

Le Gonideg (1775 – 1838). Bibl bet embannet e 1866 gand Troude.

Troet e oa bet ar Bibl diwar “Biblia sacra vulgata... (Lugduni, 1738).

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Implijoud a ra “pehini, pere“, “e peleh“ evel e galleg, ha “penaoz“ en eun doare iskiz a-walh. Faziou kemmaduriou a zo ivez. Reizet int bet. Aliez a-walh e laka reiz eun ano evel hini ar ger kevatal e galleg. Reizet eo bet ar faziou-ze. Lakaad a ra aliez ar raganoiou-gour, renadennoù anezo, en eur plas fall goude ar verb, hag e ra gand ar raganoiou-gour renerien anezo evel pa vefent renadennoù. Aliez a-walh e ra gand ar verb “gervel“ e-leh “eñvel“. Evitañ e talv “ar bobl“ kement ha “tud ar bobl“.

Ha viou-koukoue a zo...

Hervez Dujardin, “La vie et les œuvres de Le Gonidec“, Le Gonidec serait à classer parmi les mauvais écrivains bretons“

Roll leoriou an Testamant koz

Ar Hanedigez

An Egzod

Al Levitik

An Niverou

An Deuteronom

Levr Jozue

Ar Varnerien

Levr Ruth

Levr kenta Samuel, a halvom levr kenta ar Roueed

Levr 2 Samuel, a halvom Eil levr ar Roueed

Levr 3 ar Roueed, hervez an Hebreed, ar henat euz a Valakim

Levr 4 ar Roueed, hervez an Hebreed, an eil euz a Valakim

Ar Paralipomedon. Levr kenta.

Ar Paralipomedon Eil levr

Esdras. Levr kenta.

Levr Nehemias. An eil euz a Esdras.

Levr Tobias

Levr Judith

Levr Ester

Levr Job

Levr ar Psalmou (n'int ket bet adskrivet)

Levr ar Hrennlavariou

Àn Ekleziastez, pe ar Prezeger

Kanaouenn kanaouennoù Salomon.

Levr ar Furnez

Levr ar Prezeger, pe an Ekleziasatik

Ar hanedigez

(Tammou)

I Pennad

Euz a Grouidigez ar bed

1. Er penn kenta, Doue a grouas an neñv hag an douar.
2. Hogen an douar a oa dizoare ha goullo, hag an deñvalijenn a oa war-horre al lonk : ha spered Doue a oa douget war an doureier.
3. Ha Doue a lavaras : Ra vezo greet ar goulou, hag ar goulou a oe greet.
4. Ha Doue a welas penaoz ar goulou a oa mad : hag e rannas ar goulou dioh an deñvalijenn.
5. Hag e halvas ar goulou Deiz, hag an deñvalijenn, Noz : hag euz ar pardaez hag euz ar mintin e oe greet an deiz kenta.
6. Doue a lavaras ivez : Ra vezo greet an oabl e-kreiz an doureier, ha ra ranno an doureier dioh an doureier.
7. Ha Doue a reas an oabl hag a rannas an doureier a oa dindan an oabl, dioh ar re a oa dreist an oabl. Hag evel-se e oe greet.
8. Ha Doue a halvas an oabl Neñv ; hag euz ar pardaez hag euz ar mintin e oe greet an eil deiz.
9. Doue a lavaras c'hoaz : R'en em zastumo an doureier a zo dindan an neñv en eul leh hepken, ha r'en em ziskouezo ar seh. Hag evel-se e oe greet.
10. Ha Doue a halvas ar seh, Douar, hag an dastum euz an doureier a halvas, Mor. Ha Doue a welas e oa mad kement-se.
11. Ha Doue a lavaras : Ra zougo an douar geot glaz hag a ray had, ha gwez-frouez a ray frouez dioh o gouenn, hag euz a bere an had en em hray enno o-unan war an douar. Hag evel-se e oe greet.
12. Hag an douar a zougas geot glaz, pehini a roe a roe e had dioh e ouenn, ha gwez-frouez, pere o-doa o had enno dioh o gouenn. Ha Doue a welas penaoz kement-se a oa mad.
13. Hag euz ar pardaez hag euz ar mintin e oe greet an trede deiz.
14. Doue a lavaras ivez : Ra vezo greet goulaouennou en oabl an neñv, ha ra rannint an deiz hag an noz, ha ra vezint da aroueziou d'an amzeriou, d'an deizioù ha d'ar bloazioù.
15. Evid ma lugernint en oabl an neñv, ha ma houlaouint an douar. Hag evel-se e oe greet.
16. Ha Doue a reas diou houlaouenn vraz ; eur houlaouenn vrasoh, evid rena an deiz, hag eur houlaouenn vihannoh, evid rena an noz : ar stered a reas ivez.
17. Hag o lakaad a reas en oabl an neñv, evid ma lugerchent war an douar ;
18. Hag evid ma renchent an deiz hag an noz, ha ma rannchent ar goulou dioh an deñvalijenn. Ha Doue a welas e oa mad kement-se.
19. Hag euz ar pardaez hag euz ar mintin e oe greet ar pevare deiz.
20. Doue a lavaras ivez : Ra savo euz an doureier loened-stlej beo, hag evned a neizo war an douar dindan oabl an neñv.
21. Ha Doue a grouas ar pesked braz hag an oll anevaled a vev hag a fiñv, a oa bet ganet gand an doureier, pep hini dioh e ouenn, hag an oll evned dioh o gouenn. Ha Doue a welas penaoz kement-se a oa mad.
22. Hag e vennigas anezo, o lavaroud : Kreskit ha paotit, ha leugnit an doureier euz ar mor ; ha ra baoto an evned war an douar.

23. Hag euz ar pardaez hag euz ar mintin e oe greet ar pempved deiz.
24. Doue a lavaras ivez : Ra zavo euz an douar loened veo dioh o gouenn ; loened zoñv, ha loened-stlej, ha loened fero an douar dioh o gouenn. Hag evel-se e oe greet.
25. Ha Doue a reas al loened fero euz an douar dioh o gouenn, hag al loened zoñv hag an oll loened euz an douar pep hini dioh e ouenn. Ha Doue a welas e oa mad kement-se.
26. Hag e lavaras : Gream an den dioh or skeudenn ha dioh on heñvedigez : ha re vezo mestr war pesked ar mor, ha war evned an neñv, ha war al loened fero, ha war an douar oll, ha war an oll loened-stlej a fiñv war an douar.
27. Ha Doue a grouas an den dioh e skeudenn e-unan : e groui a reas dioh skeudenn Zoue, o hroui a reas gwaz ha maouez.
28. Ha Doue a vennigas anezo, hag a lavaras : Kreskit ha paotit, ha leugnit an douar, ha likit-eñ da bleaga dindannoh, ha bezit mestr war pesked ar mor, ha war evned an neñv, ha war an oll loened a fiñv war an douar.
29. Ha Doue a lavaras : Setu em-eus roet deoh an oll heot a zoug had war an douar, hag an oll wez pere o-deus o had enno o-unan, dioh o gouenn, evid ma vezint deoh da voued ;
30. Ha d'an oll loened euz an douar, ha d'an oll evned euz an neñv, ha da gement hini a fiñv war an douar, hag a zo beo-buhezeg, evid ma o-devezo peadra da voueta. Hag evel-se e oe greet.
31. Ha Doue a welas kement en-doa greet : ha mad-meurbed e oant. Hag euz ar pardaez hag euz ar mintin e oe greet ar c'hwehved deiz.

II Pennad

Doue a ra ar Wreg

1. Peurhreet e oe eta an neñvou hag an douar, hag an oll draou kaer a zo enno.
2. Doue a beurhreas e ober d'ar seizved deiz ; hag eh arsavas d'ar seizved deiz e oll oberiou.
3. Hag e vennigas ar seizved deiz, o veza ma oa arsavet en deiz-se, goude beza krouet an oll draou en-doa da ober.
4. Setu ar hanedigez euz an neñv hag euz an douar pa oent krouet, en deiz ma reas an Aotrou Doue an neñv hag an douar.
5. Hag an oll blantennou euz ar parkeier, keit ma oant savet euz an douar, hag an oll heot euz ar mêziou, kent ma oant diwanet : rag an Aotrou Doue n'en-doa ket c'hoaz lakaet ar glao da goueza war an douar, ha ne oa den evid labourad an douar.
6. Hogen eun eneienn a zave euz an douar, hag a zoure oll horre an douar.
7. An Aotrou Doue a reas 'ta an den gand al ledid euz an douar, hag a hwezas war e zremm eur c'hwez a vuhez, hag an den a oe lakaet beo-buhezeg.
8. Hogen an Aotrou Doue adaleg ar penn kenta en-doa savet gwez en eul liorz kaer-meurbed, e pehini e lakaas an den en-doa greet.
9. Hag an Aotrou Doue a lakaas da zavel euz an douar gwez a bep gouenn, kaer da weled ha frouez mad da zebri : ha gwezenn ar vuhez e-kreiz al liorz, ha gwezenn ar ouiziegez euz ar mad hag euz an droug.
10. Hag euz al leh kaer-ze e tilamme eur ster evid दौरa al liorz, hag ahano en em ranne e pevar fenn.
11. Unan anezo a zo anvet Fizon : hennez eo a ra an dro oll da vro Hevilath, e leh ema an aour.

12. Hag aour an douar-ze a zo euz ar re wella : eno e kaver ar bedelion¹ hag ar mên anvet oniks.

13. Hag an eil penn ster a zo anvet Gehon : hennez eo a ra an dro oll da vro Etiopia.

14. Hag an trede penn ster a zo anvet Tigr : hennez a red etrezeg an Asiried. Hag ar pevare penn ster eo an Eufratez.

15. Hag an Aotrou Doue a gemeras an den, hag e lakaas el liorz kaer-meurbed, evid m'hel labourje ha m'hen diwallje.

16. Hag e hourmenennas dezañ, o lavaroud : Debr euz an oll wez euz al liorz.

17. Hogen na zebr ket euz ar wezenn a ouiziegez euz ar mad hag euz an droug ; rag e pe zeiz bennag ma tebri euz anezi, e varvi.

18. An Aotrou Doue a lavaras ivez : N'eo ket mad e ve an den e-unan ; gream dezañ eur skoazell heñvel outañ.

19. An Aotrou Doue eta, goude beza greet gand douar an oll loened euz an douar, hag an oll evned euz an neñv, o degasas dirag Adam, evid ma welje penaoz o anvezje. Rag pe ano bennag a roas Adam da beb loen, hennez eo e ano.

20. Adam a anvas eta dre o ano an oll loened, hag an oll evned euz an neñv, hag an oll loened fero euz an douar. Hogen n'en em gave ket evid Adam eur skoazell heñvel outañ.

21. An Aotrou Doue a gasas eta da Adam eur housk kaled : ha pa oe kousket, e tennas unan euz e gostou, hag e lakaas kig en e leh.

22. Hag an Aotrou Doue, gand ar gostezenn en-doa tennet euz a Adam, a reas ar wreg, hag he degasas da Adam.

23. Hag Adam a lavaras : Setu bremañ askorn va eskern, ha kig va hig ; houmañ a vezo anvet maouez, dre ma eo bet kemeret euz ar gwaz.

24. Rag-se, ar gwaz a guitay e dad hag e vamm, hag en em stago ouz e wreg : ha daou e vezint en eur hig hepken.

25. En noaz e oant o-daou, da lavaroud eo, Adam hag e wreg, ha ne ruzient ket.

III Pennad

Euz a behed an den hag euz e gastiz

1. Hogen an naer a oa ar gwidreüsa euz an oll loened euz an douar greet gand an Aotrou Doue. Hag e lavaras d'ar vaouez : Perag en-deus-eñ Doue gourhemennet deoh na zebrjeh ket euz an oll wez euz al liorz ?

2. Ar wreg a lavaras dezi : Debri a reom euz a frouez ar gwez a zo el liorz.

3. Hogen e-keñver frouez ar wezenn a zo e-kreiz al liorz, en-deus Doue gourhemennet deom na zebrjem ket anezo, ha en zaoljem ket an dorn warnezo, gand aon na varvjem.

4. Hogen an naer a lavaras d'ar wreg : A-grenn ne varvot ket.

5. Rag gouzoud a ra Doue penaoz e pe zeiz bennag e tebrot anezo, e tigo ho taoulagad : hag e viot evel doueou, oh anaoud ar mad hag an droug.

6. Ar wreg a welas eta penaoz ar frouez-se a oa mad da zebri, brao d'an daoulagad ha kaer da weloud. Kemeroud a reas diouto, hag e tebras ; hag e roas d'he ozah, pehini a zebras ivez.

7. Hag o daoulagad a zigoras dezo o-daou : ha pa anavezont penaoz e oant en noaz, e wejont deliou gwez-fiez da ober beb a houriz.

¹ bedelion : ? bdellium e galleg.

8. Ha pa glevjont mouez an Aotrou Doue pehini a valee dre al liorz e-pad an avelig a zav goude kreisteiz, Adam hag e wreg a yeas da guza euz a-zirag an Aotrou Doue, e-touez ar gwez euz al liorz.

9. Hag an Aotrou Doue a halvas Adam, hag a lavaras dezañ : Peleh emaout-te ?

10. Hag eñ a lavaras : Da vouez am-eus klevet el liorz ; hag aon em-eus bet o veza ma oan en noaz, hag on eet da guza.

11. Ha Doue a lavaras dezañ : Piou en-deus roet da anaoud dit penaoz edos en noaz, nemed debret ez-pe euz ar wezenn m'am-boa gourhemennet dit na zebrjes ket anezi ?

12. Hag Adam a lavaras : Ar vaouez eh-eus roet din da eil, he-deus roet din frouez ar wezenn, hag em-eus debret.

13. Hag an Aotrou Doue a lavaras d'ar wreg : Perag eh-eus-te greet kement-se ? Hag hi a lavaras : An naer he-deus va zouellet, hag em-eus debret.

14. Hag an Aotrou Doue a lavaras d'an naer : O veza ma eh-eus greet kement-se e vezi milliget e-touez an oll anevaled ha loened an douar : war da gov e kerzi, hag e tebri douar e-pad an oll zeiziou euz da vuhez.

15. Kas a lakain etre te hag ar wreg hag etre he gouenn ha da hini : hi a flastro da benn, ha te a glasko flemma anezi e seul he zroad.

16. D'ar wreg e lavaras ivez : Me az lakaio da houzañv kalz a boaniou e-pad ma vezi brazez : genel a ri bugale er hloaz ; dindan beli da ozah e vezi, hag eñ a hourhemennet dit.

17. Da Adam e lavaras ivez : Dre ma eh-eus selaouet da wreg, ha ma eh-eus debret euz ar wezenn m'am-boa gourhemennet dit na zebrjes ket anezi, an douar a vezo milliget en abeg dit : ne gavi da voued warnezañ nemed o labourad a-nerz da zivreh e-pad oll zeiziou da vuhez.

18. Spenn hag askol a zougo dit, ha louzou an douar a zebri.

19. Dre hwez da dal e tebri bara, ken na zistroi en douar a behini out bet tennet : Rag poultr out hag e poultr e tistroi.

20. Hag Adam a roas d'e wreg an ano a Eva, o veza ma oa hi a dlee beza mamm an oll dud veo.

21. An Aotrou Doue a reas ivez da Adam ha d'e wreg saeou krehin, hag o gwiskas dezo.

22. Hag e lavaras : Setu Adam a zo deuet evel unan ahanom-ni, o houzoud ar mad hag an droug. Mirom eta bremañ outañ na astenno e zorn, ha na gemero euz ar wezenn a vuhez, na zebro anezi ha na vevo da viken.

23. Hag an Aotrou Doue her hasas er-mêz euz al liorz kaer-meurbed, evid ma labourje an douar, a behini e oa tennet.

24. Hag e kasas Adam er-mêz : hag e lakaas dirag al liorz kaer-meurbed eur Cherubin, gantañ eur hleze a dan o strinka, evid diwalloud an hent a gas d'ar wezenn a vuhez.

IV. Pennad

Kain a laz e vreur Abel

1. Hogen Adam a anevzas e wreg Eva : hag hi a zeuas da veza brazez hag a hanas Kain, en eul lavaroud : Eur gwaz am-eus bet dre zrugarez Doue.

2. Hag hi a hanas c'hoaz e vreur Abel. Hogen Abel a oe mesaer deñved, ha Kain labourer-douar.

3. Da benn meur a zeiz goude e c'hoarvezas penaoz Kaina ginnigas euz a frouez an douar e gwestl d'an Aotrou.
4. Abel a ginnigas ivez euz ar re genta ganet euz e zeñved, hag euz ar re larta anezo. Hag an Aotrou a zellas ouz Abel hag ouz e westl.
5. Hogen ne zellas ket ouz Kain, nag ouz e westl. Eur vuanegez vraz a zavas e Kain, hag e zremm a oe goeñvet.
6. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Perag 'eus savet buanegez ennout ? ha perag da zremm e' hi goeñvet ?
7. Mar grez mad ha na vezi ket gopret ; ha mar grez fall, ha na zeuy ket raktal ar pehed ouz da zor ? Hogen e youl a vezo dindanout ha trehi a ri anezi.
8. Ha Kain a lavaras d'e vreur Abel : Deom er-mêz. Ha pa edont er-mêz, e savas Kain a-eneb e vreur hag hel lazaz.
9. Hag an Aotrou a lavaras da Gain : peleh ema Abel, da vreur ? Hag eñ a lavaraz : N'oun ket : ha mirer va breur on-me ?
10. Ha Doue a lavaraz dezañ : Petra eh-eus-te greet ? Mouez gwad da vreur a harm etrezeg ennon euz an douar.
11. Bremañ eta e vezi milliget war an douar, pehini en-deus digoret e henou, ha degemeret gwad da vreur euz da zorn.
12. Pa labouri anezañ, ne roio ket e frouez dit : tehoud ha kantreal a ri war an douar.
13. Ha Kain a lavaraz d'an Aotrou : Re vraz eo va gwall evid ma hellfen kaoud an distaol anezañ.
14. Setu am hasit kuit hirio diwar an douar, hag e kuzin a-zirazoh ; hag e vezin o tehoud hag o kantreal war an douar : Piou bennag eta am havo, am lazo ?
15. Hag an Aotrou a lavaraz dezañ : Nann, kement-se ne hoarvezo ket ; hogen piou bennag a lazo Kain, a vezo gwanet seiz gwech. Hag an Aotrou a lakaas eun arouez war Gain, evid na lazje ket anezañ piou bennag hen kavje.
16. Ha Kain o veza eet kuit euz a-zirag an Aotrou, a chomas divroet war an douar war-zu ar vro a zo e sav-heol Eden.
17. Hogen Kain a anavezaz e wreg, pehini a zeuas da veza brazez, hag a hanas Henoch : hag e savas eur gêr, hag e halvas anezi Henoch euz a ano e vab.
18. Henoch a engehentas Mariael, ha Mariael a engehentas Matusael, ha Matusael a engehentas Lamech.
19. Pehini a gemeras diou wreg, unan anvet Ada, hag eben Sella.
20. Hag Ada a hanas Jabel, pehini a oe an tad euz ar re a chom dindan an teltou, hag euz ar vesearien.
21. E vreur a oe anvet Jubal : hennez a oe an tad euz ar re a gan gand an delenn ha gand an ograou.
22. Sela a hanas ivez Tubalkain, pehini a oe morzoler hag oberour e kement labour arem hag houarn. Noema a oa c'hoar da Dubalkain.
23. Ha Lamech a lavaraz d'e wragez Ada ha Sela : selaouit va mouez, gwragez Lamech, klevit va lavar : o veza ma am-eus lazet eun den en-deus va goullet hag eun den yaouank en-deus bronduet ahanon.
24. E vezo roet seiz kastiz evid Kain : hogen evid Lamech deg gwech ha tri-ugent seiz gwech.
25. Hag Adam a anavezaz adarre e wreg : hag hi a hanas eur mab, hag a halvas anezañ Seth, o lavaroud : Doue en-deus lakaet ennon gouenn eur mab all e-leh Abel a zo bet lazet gand Kain.
26. Ganet e oe ivez eur mab da Zeth, pehini her halvas Enos : hennez a oe ar henta o pedi gand lid ano an Aotrou.

V. Pennad

Euz a nested Adam beteg Noe

1. Setu amañ levr nested Adam. En deiz ma krouas Doue an den, her greas diou heñveledigez Doue.
 2. Gwaz ha maouez o hrouas, hag e vennigas anezo : hag e halvas anezo Adam, en deiz ma oent krouet.
 3. Hogen Adam a vevas deg vloaz ha c’hweh-ugent ; hag eh engentas eru mab diou e skeudenn hag e heñveledigez, hag e halvas anezañ Seth.
 4. Ha deziou Adam, goude beza engehentet Seth, a oe euz a eiz kant vloaz : hag en-devoe mibien ha merhed.
 5. Hag an oll zeziou euz a vuhez Adam a oe euz a nao hant vloaz ha tregont, hag e varvas.
 6. Seth a vevas ivez pemp bloaz ha kant, hag eh engehentas Enos.
 7. Ha Seth a vevas, goude beza engehentet Enos, seiz vloaz hag eiz kant, hag en-devoe mibien ha merhed.
 8. Hag oll zeziou Seth a oe euz a zaouzeg vloaz ha nao hant, hag e varvas.
 9. Enos vevas deg vloaz ha pevar-ugent, hag eh engehentas Kainan.
 10. Ha goude beza engehentet Kainan, Enos a vevas pempzeg vloaz hag eiz kant, hag en-devoe mibien ha merhed.
 11. Hag oll zeziou Enos a oe euz a bemp ploaz ha nao hant, hag e varvas.
 12. Kainan a vevas deg vloaz ha tri-ugent, hag eh engehentas Malaleel.
 13. Ha goude ma oe ganet Malaleel, Kainan a vevas eiz kant vloaz ha daou-ugent, hag eh engehentas mibien ha merhed.
 14. Hag oll zeziou Kaninan a oe euz a zeg vloaz ha nao hant, hag e varvas.
 15. Maleel a vevas pemp ploaz ha tri-ugent, hag eh engehentas Jabel.
 16. Ha goude beza engehentet Jabel, Maleel a vevas eiz kant vloaz ha tregont, hag en-devoe mibien ha merhed.
 17. Hag oll zeziou Maleel a oe euz a eiz kant vloaz pemzeh ga pevar-ugent, hag e varvas.
- (Trohet amañ beteg 28) :*
28. Hag e halvas anezañ Noe, o lavaroud : hemañ on dihlararo euz a oberiou hag euz a labouriou on daouarn, en douar en-deus milliget an Aotrou.
 29. Ha goude beza engehentet Noe, Lamech a vevas pemp kant vloaz pemzeh ha pevar-ugent, hag en-devoe mibien ha merhed.
 30. Hag oll zeziou Lamech a oe euz a zeiz kant vloaz seiteg ha tri-ugent, hag e varvas. Hogen Noe, pa oe deuet d’an oad aq bemp kant vloaz, a engehentas Sem, Kam ha Jafeth.

VI. Pennad

Euz al liñvadenn

1. Hogen an Aotrou a lavaras da Noe : Kee en arh ; te ha da oll diad : rag gwelet em-eus penaoz e oas gwirion dirazon e-kreiz ar rumm tud-mañ.
2. Euz al loened hlan kemer seiz ha seiz, pared ha parezed : hag euz al loened louz daou ha daou, pared ha parezed.

3. Hag ivez euz a evned an neñv seiz ha seiz, pared ha parezed ; evid ma vezo miret o gouenn war horre an douar oll.
4. Rag goude seiz devez all c'hoaz, me a lakay da hlaolia war an douar e-pad daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez : hag e lamin diwar an douar an oll re veo am-eus greet.
5. Noe a reas 'ta kement en-doa an Aotrou gourhemennet dezañ.
6. C'hweh-kant vloaz en-doa pa oe beuzet an douar gand doureier al liñvadenn.
7. Ha Noe gand e vibien, e wreg ha gwragez e vibien a yeas en arh en abeg da zoureier al liñvadenn.
8. Al loened hlan hag ar re louz, an evned ha kement a fiñv war an douar,
9. a yeas ivez gand Noe en arh, daou ha daou, par ha parez, evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet da Noe.
10. Ha pa oe tremenet seiz devez, doureier al liñvadenn a veuzas an douar.
11. Er bloavez c'hweh-kant euz a vuhez Noe, d'an eil miz, d'ar seitegved euz ar miz, an oll vammennou euz al lonk-braz a darzas, hag al laerezou euz an neñv a oe digoret.
12. Hag ar glao a gouezas war an douar e-pad daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez.
13. E tarz an deiz-se, Noe, ha Sem, ha Kam, ha Jafeth e vibien, hag e wreg, ha teir gwreg e vibien a yeas en arh.
14. Ar re-mañ, hag an oll loened dioh o gouenn, hag an oll loened zoñv dioh o gouenn, ha kement a fiñv war an douar dioh o gouenn, ha kement a nij dioh o gouenn, hag an oll evned, hag an oll anevaled a zav enne ar
15. A yeas gand Noe en arh, peb a zaou, euz a bep kig e pehini e oa ar c'hwez a vuhez.
16. Hag ar re a oa eet e-barz, a oa pared ha parezed, a bep kig, evel m'en-doa gourhemennet Doue da Noe : hag an Aotrou a brennas an nor warnezañ a-ziavêz.
17. Hag al liñvadenn a gouezas war an douar e-pad daou-ugent devez : hag an doureier a greskas, haqg a zavas uhel an arh diwar an douar.
18. An doureier a greskas kreñv : hag e holjont kement tra a oa war horre an douar : hogen an arh a oa douget war an doureier.
19. An doureier a zavas kalz dreist an douar : hag an uhella menezioù euz a zindan an neñv a oe goloet.
20. An dour a zavas pemzeg ilinad uhellog eged ar menezioù en-doa goloet.
21. Kaset e oe da get kement kig a fiñve war an douar, an evned, al loened zoñv, al loened fero, an amprevaned a stlej war an douar, an oll dud,
22. ha kement en-doa ar c'hwez a vuhez war an daouar, a varvas.
23. Doue a gasas da get kement en-doa buhez war an douar, adaleg an den beteg al loened, ken an amprevaned, ken an evned ; kaset e oent da get diwar an douar ; ne chomas nemed Noe, hag ar re a oa gantañ en arh.
24. Hag an doureier a holoas an douar e-pad kant hanter-kant devez.

VIII Pennad

Noe a ya er-mêz euz an arh

1. Hogen Doue en-doe koun euz a Noe, euz an oll loened fero, hag euz an oll loened zoñv a oa gantañ en arh, hag e tegasas avel war an douar, hag an doureier a vihannaas.

2. Mammennou al lonk braz, ha laerezou an neñv a oe stanket : ha glaveier an neñv a oe dalhet.
3. Hag an dourier kaset ha degaset a yeas kuit diwar an douar : ha goude kant hanter-kant devez e teujont da vihannaad.
4. Ha d'ar seizved miz, d'ar seizved devez warn-ugent euz ar miz, an arh a chomas stok war veneziou an Armenia.
5. Hogen an doureier a yeas da vihannaad beteg an degved miz : hogen d'an degved miz, d'an deiz kenta euz ar miz, e oe gwelet lein ar meneziou.
6. Hogen pa oa tremenet daou-ugent devez, Noe a zigoras prenest an arh en-doa greet, hag a laoskas eur vran,
7. pehini a yeas kuit, ha ne zistroas ket, ken na oe dizehet an doureier war an douar.
8. Leskel a reas ivez eur goulm war-lerh ar vran, evid ma welje ma oa tehet an doureier diwar horre an douar.
9. Houmañ, o veza ne gavas ket e pe leh e lakaje he zroad, a zistroas da gaoud Noe en arh : rag an doureier a oa c'hoaz war horre an douar oll. Noe a astennas e zorn, he hemeras hag he lakaas en arh.
10. Goude beza gortozet seiz devez all, e laoskas a-nevez ar goulm euz an arh.
11. Hag houmañ a zistroas d'e gavoud war ar pardaez, ganti en he beg eur skourr olivez a oa deliou glaz outañ. Noe a anavezaz 'ta penaoz an doureier a oa tehet diwar an douar.
12. Gortoz a reas koulskoude seiz devez all : hag e laoskas ar goulm, pehini na zistroas mui d'e gavoud.
13. Evel-se, er bloavez unan ha c'hweh-kant, d'ar miz kenta, d'an deiz kenta euz ar miz, an doureier a oa en em dennet diwar an douar ; ha Noe o tigeri toenn an arh, a zellas, hag a welas penaoz an douar a oa dizehet war e horre.
14. D'an eil miz, d'ar seizved deiz warn-ugent euz ar miz, an douar a oa seh oll.
15. Ha Doue a gomzas ouz Noe, o lavaroud :
16. Kee er-mêz euz an arh, te ha da wreg, da vibien ha gwrazez da vibien ganez.
17. Kas ganez al loened ezu an oll gig, pere a zo en arh, an evned, al loened pevar-zroadeg hag an oll amprevaned, pere en em stlej war an douar, ha kerzit war an douar : kreskit ha paotit warnezañ.
18. Noe a yeas eta er-mêz, ha gantañ e vibien, e wreg ha gwrazez e vibien.
19. An oll loened fero, al loened zoñv, hag an amprevaned pere en em stlej war an douar, diou o gouenn, a yeas ivez er-mêz euz an arh.
20. Hogen Noe a zavas eun aoter d'an Aotrou : hag o kemeroud ezu an oll loened hag euz an oll evned hlan, e kinnigas anezo oh o suja war an aoter.
21. Ar c'hwez euz a gement-se a oa kavet c'hwek gand an Aotrou, hag e lavaraz : Biken mui ne roin va malloz d'an douar en abeg d'an dud : rag ar skiant hag ar mennoz euz a galon an den a zo douget d'an droug adaleg e yaouankiz : ne skoin mui 'ta gand an oll re veo evel m'am-eus greet.
22. E-pad an oll zeiziou euz an douar, an haderez hag ar mederez, ar yenienn hag an domnder, an hañv hag ar goañv, an noz hag an deiz a zeuio heb distag an eil oh heul egile.

IX. Pennad

Kevredigez Doue gand an dud

1. Doue a vennigas Noe hag e vugale, hag a lavaras dezo : kreskit ha paotit, ha leugnit an douar.
2. R-o-devezo spont hag aon razoh an oll loened euz an douar, an oll evned euz an neñv ha kement a fiñv war an douar : an oll besked euz ar mor a zo lakaet etre ho taouarn.
3. Kement a fiñv hag a vev a vezo deoh da voued : o roet em-eus oll deoh evel al louzou hlaz.
4. Gand na zebrot ket a gig nemed e ve diwadet.
5. Rag me a houlenno digand an oll loened ar gwad euz ho kalonou : hag e houlennin buhez an den digand dorn an den ha digand dorn e vreur.
6. Da biou bennag en-devezo skuillet gwad an den, e vezo ivez skuillet e wad : rag an den a zo greet dioh heñveledigez Doue.
7. Hogen c'hwi, kreskit ha paotit, it war an douar, ha leugnit eñ.
8. Kement-mañ a lavaras ivez Doue da Noe, ha d'e vugale gantañ :
9. Setu me a ray eur gevredigez ganeoh, ha gand ho kouenn war ho lerh.
10. Ha gand peb loen beo a zo ganeoh, ken gand an evned, ken gand al loened zoñv, ha gand an oll loened euz an douar, pere a zo deuet euz an arh, ha gand an oll loened fero euz an douar.
11. Kevredigez a rin ganeoh, ha biken mui ne vo kaset da get an oll gig gand doureier al liñvadenn, ha ne vezo mui a liñvadenn da veuzi an douar.
12. Ha Doue a lavaras : houmañ eo an arouez a gevredigez a roan etre me ha c'hwi, ha da beb loen beo a zo ganeoh, a rumm da rumm, da virviken.
13. Va gwareg a lakain er hoabr, hag e vezo an arouez a gevredigez etre me hag an douar.
14. Ha pa'm-bezo goloet an neñv a goabr, va gwareg a vezo gwelet er hoabr.
15. Hag e teuy koun euz va hevredigez ganeoh, hag euz kement ene beo a zeu da enaoui ar hig : ha ne vezo mui a zour a liñvadenn evid beuzi an oll gig.
16. 17. (*tennet kuit*).
18. Mibien Noe deuet euz an arh a oa Sem, Kam, ha Jafeth : ha Kam a oa tad da Ganaan.
19. Ar re-ze eo tri mab Noe : ha ganto e oe skuillet gouenn an oll dud war an douar oll.
20. Noe, labourer-douar, a oe ar henta o hounid an douar, hag a blantas ar winienn.
21. Hag o veza evet gwin, e vezvas, hag e chomas en noaz en e delt.
22. Pa welas Kam, tad Kanaan, penaoz tra-mezuz e dad a oa noaz, ez eas er-mêz d'hel lavaroud d'e zaou vreur.
23. Hogen Sem ha Jafeth a lakaas eur zae vraz war o diouskoaz, hag o kerzoud a-gil, e holjont tra-mezuz o zad : o dremm a oa distroet, ha ne weljont tra-mezuz o zad.
24. Hogen Noe o tihun euz e win, hag o klevoud petra en-doa greet dezañ e vab yaouanka,
25. a lavaras : Ra vezo milliget Kanaan, ra zeuy da vevel da vevelien e vreudeur.
26. Hag eñ a lavaras : Ra vezo meulet an Aotrou, Doue Sem, ra vezo Kanaan mevel dezañ.
27. Ra gresko Doue Jafeth, ha ra jomo dindan teltou Sem ; ha ra vezo Kanaan mevel dezañ.
28. Hogen Noe a vevas goude al liñvadenn tri-hant vloaz hag hanter-kant.
29. Hag e oll zeziou a oe euz nao-hant vloaz hag hanter-kant ; hag e varvas.

X. Pennad

Nested mibien Noe

(Bet tennet kuit)

XI. Pennad

Tour Babel. Kemmesk ar yezou.

1. Ne oa neuze war an douar nemed eur yez, hg eun heveleb prezeg.
2. Hag o veza ma teuent euz ar zav-heol, e kavjont eur gompezenn e douar Sennaar, hag e chomjont enni.
3. Hag an eil a lavaras d'egile : Deuit, greom brikennou ha poazom i oh an tan. Hag i o-doe brikennou e leh mein, ha peg-tano e leh pri-raz.
4. Hag e leverjont : Deuit, greom eur gêr evidom, hag eun tour, eus a behini al lein a dizo an neñv ; ha brudom on ano, a-barz ma vezim skignet war an douar oll.
5. Hogen an Aotrou a ziskennas da weloud ar gêr hag an tour a zave bugale Adam.
6. Hag e lavaras : Setu n'int nemed eur bobl, ha n'o-deus evito oll nemed eur yez : en em lakaet int da ober kement-se, ha ne guitaint ket o youl, ken n'o-devezo peurhreet.
7. Deuit eta, diskennom, ha kemmeskom eno o yez, evid na glevo ket an eil mouez eben.
8. Hag evel-se an Aotrou o skignas euz al leh-se war an douar oll, hag eh ehanjont sevel ar gêr.
9. Ha dre-ze eo e oe anvet Babel, rag eno eo e oe kemmesket yez an oll dud : hag ahano eo e skignas an Aotrou anezo war horre an oll vroiu.
10. Setu amañ nested Sem : Sem en-doa kant vloaz pa engehentas Arfaksad, daou vloaz goude al livñvadenn.

(Tennet kuit beteg ar pennad 19)

XIX Pennad

Dismantr Sodom ha Gomor

1. Ha daou êl a zeuas da Zodom war ar pardaez, ha Lot a oa azezet e-tal dor gêr. Ha pa o gwelas, e savas hag ez eas war o arbenn hag en em strinkas d'an douar.
2. Hag e lavaras : Deuit, me ho ped, aotrounez, da di ho servicher, ha chomit eno : gwalhit ho treid, ha d'ar mintin ez eoh en hoh hent. Ar re-mañ a lavaras : E neb doare, hogen ni a chomo war ar ru.
3. O fedi a reas kaer da zond gantañ : ha pa oent eet en e di, e reas banvez dezo ; poaza a reas bara dihoell hag e tebrjont.
4. Hogen a-barz ma'z ejont da gousked, tud kêr a gelhias an ti adaleg ar vugale beteg an dud goz, an oll bobl war eun dro.
5. Hag i a halvas Lot, hag a lavaras dezañ : Peleh ema ar wazed a zo eet en da di henoz ? Kas i amañ, evid ma anavezim anezo.
6. Lot a yeas d'o havoud, ha goude beza serret an nor war e lerh, e lavaras dezo :
7. Na rit ket, me ho ped, va breudeur, na rit ket an droug-se.
8. Diou verh am-eus pere n'o-deus c'hoaz anavezet gwaz ebed ; me o degaso deoh, ha c'hwi a ray anezo evel a gerot ; hogen na rit droug ebed d'ar wazed-se, o veza ma int deuet dindan toenn va zi.

9. Hag i a lavaras : kee alese. Lavaroud a rejont c'hoaz : Deuet out amañ evel eun diavêziad : ha da varner e fell dit beza ? Te eo eta a aozim gwasoh egeto. Hag i en em daolas war Lot gand diboell : hag i a oa dare da derri an nor.

10. Hag an daou zen a astennas o dorn, hag a zegasas Lot en ti, hag a zerras an nor.

11. Hag e skojont a-zallidigez a re a oa er-mêz, adaleg ar bihanna beteg ar brasa, en heveleb doare na helljont mui kavoud an nor.

12. Neuze e leverjont da Lot : ha te eh-eus amañ unan bennag euz da gerent ? Eur mab-kaer, pe mibien, pe merhed ; kas er-mêz euz a gêr da oll dud :

13. Rag ni a ya da zismantra al leh-se, o veza ma eo kresket o garm dirag an Aotrou, hag en-deus on degaset evid o holl.

14. Lot eta o veza eet er-mêz, a gomzas ouz e vibien-gaer pere a dlee dimezi gand e verhed, hag e lavaras : savit hag it kuit euz al leh-mañ ; rag an Aotrou a ya da zismantra ar gêr-mañ. Hogen i a gredas e komze evel-se dre vourd.

15. Da darz-an-deiz, an êlez a gentraoue Lot, o lavaroud : Sao, kemer da wreg, hag an diou verh eh-eus, gand aon na vent kollet ivez e dismantr ar gêr-mañ.

16. O veza ne ree van, e krogjont en e zorn hag e dorn e wreg, hag e re e ziou verh, dre m'en-doa an Aotrou o espernet.

17. Hag e kasjont anezañ, hag hel lakajont er-mêz euz a gêr : hag eno e komzjont outañ, o lavaroud : savete da vuhez, na zell ket war da lerh, ha na chom ket en oll vro tro-war-dro : hogen teh war ar menez, gand aon na ves kollet ivez gand ar re all.

18. Ha Lot a lavaras dezo : Me az ped, Aotrou,

19. Pa en-deus kavet da zervijer gras dirazout, ha pa eh-eus diskouezet da drugarez vraz em heñver, o savetei va buhez, n'hellan ket tehi war ar menez, gand aon na ven tizet gand an droug, ha na varvjen.

20. Bez' ez eus tost ahann eur gêr da behini e hellan tehi ; bihan eo, hag enni en em zavetein : ha n'he-defe hi ket bihan, ha ne vevin-me ket enni ?

21. Hag an Êl a lavaras dezañ : Setu ivez eh aotreat da bedenn diwar-benn kement-se, ha ne zismantrin ket ar gêr evid pehini eh-eus komzet ouzn.

22. Hast afo ha teh eno : rag ne hellin ober netra, ken na vezi eet e-barz. Rag-se eo bet anvet ar gêr-ze Segor.

23. An heol a zave war an douar, pa'z ee Lot e Segor.

24. Neuze an Aotrou a lakaas da goueza war Zodom ha war Homor eur glao a soufr hag a dan degaset gand an Aotrou euz an neñv.

25. Hag e tismantras ar hêriou-ze, hag an oll vro tro-war-dro, hag ar re oll a chome er hêriou, ha kement a oa glaz war an douar.

26. Hogen gwreg Loth, o veza sellet war he lerh, a oa troet en eur bern holen skeudenn-ze.

27. Abraham, o veza savet mintin-mad, a yeas d'al leh ma oa chomet a-raog da gomz gand an Aotrou.

28. Hag o veza sellet ouz Sodom ha Gomor, hag ouz an oll zouar euz ar vro-ze, e welas ludu ruz-tan a zave diwar an douar evel ar moked euz a eur forn.

29. Hogen pa zismantre Doue kêriou ar vro-ze, en-doe koun euz Abraham, hag e tieubas Lot euz a zismantr ar hêriou e pere e oa bet o chom.

30. Ha Lot a bignas euz a Zegor, hag a yeas da chom war ar menez hag e ziou verh gantañ, (rag aon en-doa o chom e Segor), hag e chomas en eur heo, eñ hag e ziou verh.

31. Hag ar verh hena a lavaras d'ar yaouanka : on tad a zo koz, ha n'eus chomet gwaz ebed war an douar a gement a hellfe dond d'or havoud hervez giz an douar oll.

32. Deus, mezvrom on tad gand gwin, ha kouskom gantañ, evid ma hellim miroud gouenn diouz on tad.

33. Hag a rojont eta gwin da eva d'o zad en noz-se ; hag ar verh hena a yeas d'e gavoud hag a gouskas gand he zad ; ha ne ouezas-eñ na peur ez eas e verh da gousked, na peur e savas.

34. Antronoz ar verh hena a lavaras d'ar yaouanka : Setu me em-eus kousket neizeur gand va zad, room gwin c'hoaz dezañ da eva henz hag e kouski ivez gantañ evid ma virim gouenn diouz on tad.

35. Rei a rejont c'hoaz gwin da eva d'o zad en noz-se ; hag ar verh yaouanka a yeas d'e gavoud, hag a gouskas gantañ : ha ne ouezas-eñ kennebeud na peur ez eas da gousked na peur e savas.

36. Diou verh Lot a engehentas eta diouz o zad.

37. Hag ar verh hena a hanas eur mab, hag eh anvas anezañ Meab. Hennez eo tad ar Voabited beteg hirio.

38. Ar verh yaouanka a hanas ivez eur mab, hag eh anvas anezañ Ammon, da lavaroud mab va fobl : hennez eo tad an Ammonited beteg hirio.

XX. Pennad

Abimeleg a gas tud da skrapa Sara, hag a zo kastizet

1. Abraham a yeas kuit ahanon evid mond war-zu ar hreisteiz, hag e chomas etre Kadez ha Sur : hag ez eas en eur dremen da Gerara.

2. Hag o komz euz a Zara e wreg, e lavaras : va hoar eo. Abimeleg neuze a gasas tud da skrapa Sara.

3. Hogen Doue a zeuas da gavoud Abimeleg en noz dre huñvre hag a lavaras dezañ : Setu e varvi en abeg d'ar wreg eh-eus krapet ; rag eun ozah he-deus.

4. Hogen Abimeleg n'en-doa ket lakaet e zorn warnezi, hag e lavaras : Aotrou, ha laza a ri eur bobl ne ouie ket kement-se hag a zo direbech ?

5. Ha n'en-deus ket hen lavaret din : va hoar eo ? hag hi heh-unan he-deus lavaret : va breur eo. E eeunder va halon, hag e glanded va daouarn em-eus greet kement-se.

6. Ha Doue a lavaras dezañ : Me a oar penaoz eh-eus he hreet e eeunder da galon ; ha dre-ze eo em-eus miret ouzit na behfes a-eneb din, ha n'em-eus ket da lezet da lakaad da zorn warnezi.

7. Hogen bremañ degas ar wreg-se d'e ozah, rag eur profed eo : hag e pedo evidout, hag e vevi : ha ma ne fell ket dit he degas dezañ, gouez ervad pênaoz e varvi, te ha da oll dud.

8. Abimeleg a zavas raktal e-kreiz e gousk, hag a halvas e oll dud, hag a lavaras dezo kement en-doa klevet ; hag e oll dud a oe spontet braz.

9. Abimeleg a halvas ivez Abraham, hag a lavaras dezañ : Petra eh-eus-te greet deom ? Pebez droug on-eus-ni greet dit, evid degas warnon ha war va rouantelez eur pehed ker braz ? Greet eh-eus deom ar pez na dlees ket da ober.

10. Hag oh en em glemm adarre, e lavaras : Oh petra eh-eus-te sellet oh ober evel-se ?

11. Hag Abraham a lavaras : Mennet em-eus ennon va-unan, o lavaroud : Marteze n'eus ket a zoujañs Doue el leh-mañ, hag hi am lazo en abeg d'am gwreg.

12. A-hend-all eo evid gwir eo va hoar, merh va zad eo, hogen n'eo ket merh va mamm, ha me em-eus he hemeret da wreg.

13. Hogen goude m'en-doe Doue va zennet euz a di va zad, e liviris dezi : An drugarez-mañ a ri evidon, e peb leh ma'z aim, e liviri penaoz on da vreur.

14. Neuze Abimeleg a gemeras deñved hag ejenned, ha mevelou ha mitizien, hag o roas da Abraham : degas a reas ivez dezañ Sara, e wreg.

15. Hag e lavaras : Ema an douar dirazoud, kee da chom el leh ma kiri.

16. Hogen eñ a lavaras da Zara : Setu em-eus roet mil pez arhant d'az preur, evid ma'z-pezo eur wel war da zaoulagad dirag ar re oll a zo ganez, hag e pe leh bennag ma'z i : az-pezo koun penaoz out bet krapet.

17. Neuze Abraham a bedas Doue ; ha Doue a bareas Abimeleg hag e wreg, hag e vitizien, hag hi a hanas bugale.

18. Rag ar merhed oll e ti Abimeleg a oa deuet da veza brehagn a-berz Doue, en abeg da Zara, gwreg Abraham.

XXI Pennad

Ganedigez Izaak. Agar hag Izmael a zo kaset kuit.

1. Hogen an Aotrou a zeuas da weloud Sara evel m'en-doa lavaret ; hag e sevenas d'e her.

2. Hag hi a engehentas, hag a hanas eur mab en he hozni, en amzer m'en-doa Doue e ziouganet dezi.

3. Hag Abraham a roas an ano a Izaak d'e vab, a oa bet ganet dezañ euz a Zara.

4. Hag eñ a emwadas anezañ an eizvez deiz, evel m'en-doa Doue e hourhemennet dezañ.

5. Hag eñ kantvloaveziad ; rag an oad-se en-doa pa oe tad da Izaak.

6. Ha Sara a lavaras : Doue en-deus greet c'hoarz din ; kement hini a glevo a hoarzo ganen.

7. Hag hi a lavaras c'hoaz : Piou a gredje en-divije klevet Abraham penaoz Sara a roje da zena da eur mab en-divije roet dezañ hag eñ koz ?

8. Hogen ar bugel a greskas, hag e oe dizonet : hag Abraham a reas eur banvez braz en deiz ma oe dizonet.

9. Sara o veza gwelet mab Agar, an Ejiptianez, oh ober goap euz Izaak he mab, a lavaras da Abraham :

10. Kas kuit ar vatez-se hag he mab ; rag mab ar vatez-se ne vezo ket da her gand va mab Izaak.

11. Kement-se a oe kavet garo gand Abraham, en abeg d'e vab Izmael.

12. Hogen Doue a lavaras dezañ : Na gav ket kement-se garo e-keñver ar bugel, nag e-keñver da vatez ; e kement a lavaro Sara dit, selaou he mouez ; rag euz a Izaak eo e teuio dit ar ouenn a zougo da ano.

13. Lakaad a rin ivez mab ar vatez da benn da eur vroad vraz, o veza ma eo euz da ouenn.

14. Abraham a zavas eta mintin-mad, hag a gemeras bara hag eur podad dour, hag o lakaas war ziskoaz Agar ; rei a reas dezi he mab, hag he hasas kuit. pa oe-hi eet kuit, e kantree e distro Bersabe.

15. Ha pa ne oe mui a zour er pod, e lezas ar bugel dindan unan euz ar gwez a oa eno.

16. Hag ez eas, hag eh azezas rag-eneb, war-hed eun tenn bir, rag hi a lavaras : Ne welin ken ar bugel o vervel : hag hi azezet rag-eneb, a zavas he mouez en eur ouela.

17. Hogen Doue a zelaouas mouez ar bugel ; hag eun êl Doue a halvas Agar euz an neñv, o lavaroud : Petar ‘rez-te, Agar ? N’az-pezh ket a aon, rag Doue en-deus selaouet mouez ar bugel euz al leh ma ema-eñ.

18. Sao, kemer ar bugel, ha krog en e zorn ; rag e lakaad a rin da benn da eur vroad vraz a dud.

19. Ha Doue a zigoras he daoulagad dezi hag hi a welas eur puñs dour ; hag hi a yeas, hag a gargas ar pod dour, hag a roas da eva d’ar bugel.

20. Ha Doue a oe gand ar bugel : hag hemañ a greskas hag a chomas en distro, hag a zeuas da zen yaouank ha da wareger.

21. Hag eñ a chomas e distro Faran ; hag e vamm a roas dezañ eur wreg euz a vro an Ejipt.

22. En amzer-ze, Abimeleg ha Fikol a oa e penn heh arme, a lavaras da Abraham : Doue a zo ganez e kement tra a rez.

23. Tou eta dre an ano a Zoue, penaoz na ri droug ebed din, na d’am mibien, na d’am gouenn : hogen ma’za-pezo evidon hag evid ar vro e pehini out bet o chom evel eun diavêziad, an heveleb trugarez em-eus bet evidout.

24. Hag Abraham a lavaras : Me a douo.

25. Hag eñ en em glemmas da Abimeleg diwar-benn eur puñs dour a oa bet tennet digantañ gand e vevelou.

26. Hag Abimeleg a lavaras : n’em-eus ket gouezet piou en-deus greet kement-se : ha te ivez n’eh-eus ket e roet da anaoud din ; ha me, bete vremañ, n’em-boa klevet ano euz a gement-se.

27. Neuze Abraham a gemeras deñved hag ejenned, hag o roas da Abimeleg : hag e rejont kevredigez o-daou.

28. Hag Abraham a lakaas a-du seiz dañvadig euz e dropell.

29. Hag Abimeleg a lavaras dezañ : Da betra eh-eus-te lakaet a-du ar seiz dañvadig-se ?

30. Hag eñ a lavaras : te a gemero ar seiz dañvadig-se euz va dorn, evid ma vezint da desteni din, penaoz eo me eo em-eus kleuzet ar puñs-se.

31. Hag eñ a lavaras : Rag-se eo e oe galvet al leh-se Bersabe : o veza m’o-doa touet eno o-daou.

32. Hag i a reas kevredigez e-tal puñs al le.

33. Hogen Abimeleg ha Fikol a oa e penn e arme, a zavas hag e tistrojont da zouar ar Filistined. Abraham a blantas eur hoad e Bersabe, hag a veulas eno ano an Aotrou Doue a zo a-viskoaz hag a vezo da viken.

34. Hag eñ a chomas pell amzer e douar ar Filistined.

XXII Pennad

Feiz ha sentidigez Abraham

1. Goude kement-se, Doue a arnodas Abraham, hag a lavaras dezañ : Abraham, Abraham. Abraham a lavaras : Setu-me amañ.

2. Ha Doue a lavaras dezañ : kemer Izaak, da vab pennher, pehini a garez, ha kee d’an douar a weledigez : hag eno e kinnigi anezañ din e sakrifis-losk war unan euz ar meneziou a ziskouezin dit.

3. Abraham eta o veza savet a-barz an deiz, a zibras e azen, hag a gemeras gantañ daou zen yaouank, hag Izaak e vab ; ha goude m’en-doa trohet koad evid ar sakrifis-losk, ez eas etrezeg al leh en-doa Doue gourhemennet dezañ mond.

4. An trede deiz, o veza savet e zaoulagad, e welas al leh a-bell.

5. Hag e lavaras d'e baotred : Gortozit amañ gand an azen : me ha va mab a yelo mibin, ha goude ma or-bezo azeulet, e tistroim d'ho kavoud.

6. Kemeroud a reas ar heuneud evid ar sakrifis-losk, hag hel lakaas war Izaak e vab : hogen eñ a zouge en e zaouarn an tan hag ar gontell. Ha pa gerzent o-daou kevred,

7. Izaak a lavaras d'e dad : Va zad. Hag Abraham a lavaras : Petra a fell dit, va mab ? Setu, emezañ, tan ha keuneud : peleh ema viktim ar sakrifis-losk ?

8. Hag Abraham a lavaras : va mab, Doue e-unan a gaso ar viktim euz ar sakrifis-losk. Kzerzoud a reent eta o-daou :

9. Hag e teujont d'al leh m'en-doa diskouezet Doue dezañ ; hag eno e savas Abraham eun aoter, hag e lakaas ar heuneud warnezañ : ha goude m'en-doa ereet Izaak e vab, hel lakaas war ar bern keuneud a oa war an aoter.

10. Hag Abraham a astennas e zorn, hag a gemeras ar gontell evid laza e vab.

11. Ha setu êl an Aotrou a harmas euz an neñv, o lavaroud : Abraham, Abraham. Hag eñ a lavaras : setu-me amañ.

12. Hag an êl a lavaras dezañ : Na astenn ket da zorn war ar bugel, ha na rez netra dezañ. Anaoud a ran a-vremañ penaoz e toujez Doue, pa n'eh-eus ket espernet da vab pennher en abeg din.

13. Abraham a zavas e zaoulagd, hag a welas a-dreñv e gein eur maout-tourh hag a oa dalhet dre e gerniel e-touez an drein : hag o veza e gemeret, her hinnigas e sakrifis-losk e-leh e vab.

14. Hag Abraham a halvas al leh-se an Aotrou a wel. Ahano e leverer c'hoaz hirio : An Aotrou a welo war ar menez.

15. Hogen êl an Aotrou a halvas Abraham euz an neñv evid an eil gwech, o lavaroud :

16. Touet em-eus drezon va-unan, eme an Aotrou, penaoz pa eh-eus greet kement-se, ha n'eh-eus ket espernet da vab pennher en abeg din,

17. e vennigin ahanout hag e kreskin da ouenn evel stered an neñv, hag evel an trêz a zo war aod ar mor : ha da ouenn a biaouo perzier he enebourien.

18. Hag an oll vroadou tud euz an douar a vezo Benniget en da ouenn, o veza ma eh-eus sentet ouz va mouez.

19. Hag Abraham a zistroas etrezeg e baotred, hag ez ejont kevred da Versabe, hag eñ a chomas eno.

20. Goude-ze, e oe degaset kelou da Abraham penaoz Melka he-doa ivez ganet mibien da Nakor e vreur.

21. Hus e genta ganet, ha Buz e vreur, ha Kamal tad ar Siried,

22. Ha Kased, Azau, ha Feldas, ha Jediaf.

23. Ha Batuel a behini eo ganet Rebekka : setu an eiz mab a hanas Melka da Nakor, breur Abraham.

24. E zerh anvet Roma, a hanas ivez dezañ Tabee, ha Gaham, ha Tabas, ha Maaka.
(*Bet tennet kuit ar pennadou XXIII, XXIV, XXV, XXVI, XXVII, XVIII, XIX*)

XXX Pennad

Rachel a han Jozef

1. Pa welas Rachel penaoz e oa hi brehagn, he-doe erez oh he c'hoar, hag e lavaras d'he ozah : Ro din bugale, pe e varvin.

2. Ha Jakob o vond droug ennañ, a lavaras dezi : Ha me a zo evel Doue, pehini a vir ouzit n'az-pezh frouez euz da gov ?

3. Hag hi a lavaras : Me em-eus Bala, va matez : kee d'he havoud, evid ma hano war va barlenn, ha m'am-bezo bugale anezi.
4. Hag hi eta a roas Bala dezañ da wreg.
5. Jakob o veza eet d'he havoud, hi a engehentas, hag a hanas eur mab.
6. Ha Rachel a lavaras : An Aotrou en-deus va barnet, hag en-deus selaouet va mouez, o rei din eur mab : ha rag-se eh anvas anezañ Dan.
7. Bala a engehentas adarre, hag a hanas eur mab all.
8. Ha Rachel a lavaras anezañ : Va lakaet en-deus Doue da stourm ouz va hoar, ha treh on bet : hag eh anvas anezañ Neftali.
9. Pa welas Lia penaoz e oa ehanet da henel, e roas Zelfa, he matez, da wreg da Jakob.
10. Hag houmañ a engehentas hag a hanas eur mab.
11. Ha Lia a lavaras : Gand eurvad : ha dre ze eh anvas anezañ Ged.
12. Zelfa a hanas eur mab all.
13. Ha Lia a lavaras : Evid va eurvad eo ; rag ar merhed am galvo eüruz : rag se eh anvas anezañ Azer.
14. Hogen Ruben o veza eet en eur park e amzer mederez ar gwiniz, a gavas mandragorou hag o hasas da Lia e vamm. Ha Rachel a lavaras da Lia : Ro din lod euz a vandragorou da vab.
15. Hag hi a lavaras dezi : Ha bihan dra e kavez beza skrapet va ozah diganen, ma n'az-pezh mandragorou va mab ? Ha Rachel a lavaras : Ra gousko ganez henoz evid mandragorou da vab.
16. Ha pa zistroe Jakob euz ar park diouh ar pardaez, Lia a yeas war e arbenn, hag a lavaras dezañ : D'am havoud e teui ; rag da brenet em-eus gand mandragorou va mab. Hag eñ a gouskas ganti en noz-se.
17. Ha Doue a zelaouas he fedennou : hag hi a engehentas, hag a hanas eur pempved mab.
18. Hag e lavaras : Roet en-deus Doue va gober din, o veza ma em-eus roet va matez d'an ozah : hag hi a anvas anezañ Izakar.
19. Lia a engehentas adarre, hag a hanas eur c'hwehved mab.
20. Hag e lavaras : Eun dra vad en-deuz roet Doue din : c'hoaz ar wech-mañ e chomo va ozah ganen, o veza ma em-eus ganet dezañ c'hweh mab : ha rag-se eh anvas anezañ Zabulon.
21. Goude hemañ e hanas eur verh a anvas Dina.
22. An Aotrou en-doe ivez koun euz a Rachel ; selaou a reas anezi, hag e tigoras he mammou.
23. Hag hi a engehentas, hag a hanas eur mab, o lavaroud : Doue en-deus tennet ar vez diwarnon.
24. Hag eh anvas anezañ Jozef, o lavaroud : Ra roy c'hoaz din an Aotrou eur mab all.
25. Hogen, pa oe ganet Jozef, e lavaras Jakob d'e dad-kaer : va lez da vond, evid ma tistroin d'am bro, ha d'am douar.
26. Ro din va gwraez, ha va bugale, evid pere em-eus da zervijet, evid ma'z in kuit. Te a oar gand pe wazoniez em-eus da zervijet.
27. Ha Laban a lavaras dezañ : Ra gavin trugarez dirazout : anavezet em-eus da vad ha kaer penaoz en-deus Doue va benniget en abeg dit.
28. Gar da-unan ar gober a roin dit.
29. Hag eñ a lavaras : Te a oar penaoz em-eus da zervijet ha pegen braz eo deuet da vadou etre va daouarn.

30. Nebeud a dra ez-poa a-barz ma on deut ganez, ha bremañ out deuet da veza pinvidig : rag an Aotrou en-deus da venniget kerkent ha ma on deuet ganez. Reiz eo bremañ em-be eur preder bennag gand va zi va-unan.

31. Ha Laban a lavaras dezañ : Petra a roin-me dit ? Ne fell din netra, eme Jakob : hogen mar grez ar pez a houlenan, e chomin c'hoaz da gas da beuri ha da ziwalloud da chatal.

32. Kee da weloud da zeñved oll, ha laka dioh eun tu ar re a zo briz pe marellet o gloan : hag hiviziken kemnt hini a zeuy gell, pe briz, pe marellet, ken e-touez an deñved, ken e-touez ar gevr, a vezo va gopr.

33. Warhoaz kenta, va eunder a vezo da desteni evidon, pa vezo deuet an amzer da ober ar rann dirazout : ha kement hini ha ne vezo ket gell, pe briz, pe marellet, ken e-touez an deñved, ken e-touez ar gevr, a zsikouezo on eul laer.

34. Ha Laban a lavaras : Mad e kavan ar pez a houlennez.

35. Hag en deiz-se e lakaas dioh eun tu ar gevr, hag an deñved, hag ar bouhed, hag an tourzed briz, hag ar re varellet : hag ar re oll euz a eul liou, da lavaroud eo, gwenn pe du-krenn, a lakaas anezo etre daouarn e vibien.

36. Hag eñ a lakaas 'hed tri devez-hent etre eñ hag e vab-kaer, pehini a ziwalle al lod all euz a dropell Laban.

37. Jakob eta a gemeras gwial glaz elo, gwial alamandez ha gwial platan, hag e tiruskas lod anezo : al lehiou euz a bere e oa bet tennet ar rusk, a oa gwenn da weloud : hogen ar re a oa bet lezet en o fez, a chomas glaz. Hag evel-se ar gwial en em gavas a liou disheñvel.

38. Hag eñ o lakaas er haniou e pere e skuilled an dour, evid pa zeuje an tropellou da eva, m'o-divije ar gwial dirag o daoulagad, ha ma teujent da engehenta o selloud outo.

39. C'hoarvezoud a reas eta penaoz an deñved o veza lupr, a zellas ouz ar gwial, hag e chañjont ein gell, ha briz, ha marellet.

40. Jakob a rannas e dropell ; hag o veza lakaet ar gwial er haniou dirag daoulagad an tourzed, kement hini a oa gwenn pe du-krenn a oa da Laban, hag ar re all a oa da Jakob : hag evel-se an tropellou a oe rannet.

41. Pa dlee eta an dañvedez beza tourhet en nevez-amzer, Jakob a lakaas ar gwial e kaniou an dour dirag daoulagad an tourzed hag an dañvadezed, evid ma engehentjent o selloud outo.

42. Hogen pa oa deuet an diskar-amzer, hag ar mare diweza da veza tourhet, n'o lakae ket. Evel-se ar re a oa engehentet en diskar-amzer a oa da Laban ; hag ar re a oa engehentet en nevez-amzer a oa da Jakob.

43. Hag an den-ze a binvidikaas meurbed : hag eñ en-doe tropellou braz, mitizien ha mevelou, kañvaled hag azened.

XXXI. Pennad

Distrei a ra Jakob da di e dad

1. Hogen eñ a glevas goude-ze geriou mibien Laban, pere a lavare : Kemeret en-deus Jakob kement a oa d'on tad, hag o veza deuet pinvidig gand e zanvez, eo bet brudet-braz.

2. Merzoud a reas ivez Jakob dioh dremm Laban, penaoz ne oa ket en e geñver er hiz ma oa kent.

3. Hag ouspenn-ze an Aotrou a lavaras dezañ : Distro da vro da dadou ha da dud, ha me a vezo ganez.

4. Ha Jakob a gasas da hervel Rachel ha Lia, evid dond d'e gavoud er park e pehini edo o tiwalloud e dropellou.
5. Hag eñ a lavaras dezo : Me a wel, dioh dremm ho tad, n'eo ket em heñver er hiz kent : koulskoude, Doue, va zad a zo bet a-du ganen.
6. Ha c'hwi hoh-unan a oar penaoz em-eus servijet ho tad gand va oll nerz.
7. Ho tad a zo bet displeal em heñver, o nevezi deg gwech va gopr : ha koulskoude Doue n'en-deus ket e lezet da ober droug din.
8. Pa en-deus lavaret : Ar re vriz a vezo da hopr, an deñved oll a hane ein briz. Ha pa en-deus lavaret en eneb : Ar re wenn a vezo da hopr, an deñved oll a hane re wenn.
9. Evel-se Doue en-deus lamet e zanvez digand ho tad, hag e roet din.
10. Rag pa oe deuet an amzer ma tlee an dañvadezed engehenta, em-eus savet va daoulagad, hag em-eus gwelet dre va housk penaoz ar pared a lamme war ar pazed a oa briz, ha marellet, hag euz a veur a liou.
11. Hag êl Doue a lavaras din dre va housk : Jakob. Ha me a lavaras : Setu-me amañ.
12. Hag eñ a lavaras : Sao da zaoulagad, ha gwel penaoz ar pared oll a lamm war ar pazed a zo briz, ha marellet, hag euz a veur a liou. Rag gwelet em-eus kement en-deus greet Laban dit.
13. Me eo Doue Bethel, e peleh eh-eus eouliet ar mên, hag e peleh eh-eus greet eur gouestl din. Sao bremañ, ha kee er-mêz euz ar vro-mañ, ha distro d'ar vro e pehini out ganet.
14. Rachel ha Lia a lavaras dezañ : Ha chom a ra deom eun dra bennag da gaoud e danvez hag e digouez ti on tad ?
15. Ha n'en-deus eñ ket greet en or heñver evel pa vijem bet merhed a-ziavêz ? Ha n'en-deus ket eñ or gwerzet, ha debret or gopr ?
16. Hogen Doue en-deus lamet e vadou digand on tad, hag o roet deom ha d'or mibien : rag-se gra kement en-deus gourhemennet Doue dit.
17. Nezue Jakob a zavas, ha goude beza lakaet e vugale hag e wragez war gañvaled, ez eas kuit.
18. Kas a reas gantañ e oll zanvez, hag e dropellou, ha kement en-doa gounezet er Mezopotamia, hag ez eas da gaoud Izaak, e dad, e bro Kanaan.
19. Laban a oa eet en amzer-ze da douza an deñved, ha Rachel a laeras idolou he zad.
20. Ne fellas ket da Jakob rei da anaoud d'e dad-kaer penaoz ez ee kuit.
21. Goude eta ma oe eet kuit, eñ ha kement en-doa, ha goude ma oe treuzet ar ster gantañ ha ma kerze etrezeg menez Galaad,
22. E oe diskuliet da Laban, an trede deiz, penaoz e oa tehet Jakob.
23. Laban o veza kemeret gantañ e vreudeur, a redas war e lerh e-pad seiz devez hag e tizas anezañ war venez Galaad.
24. Hogen eñ a welas dre e gousk Doue, pehini a lavaras dezañ : Diwall na liviri netra a zichek da Jakob.
25. Jakob en-doa displeget e delt war ar menez : ha pa en-doe Laban e dizet gand e vreudeur, e tisplegas ivez e delt war an heveleb menez Galaad.
26. Hag eñ a lavaras da Jakob : Perag eh-eus greet evel-se ? Hag eh-eus-te skrapet va merhed heb gouzoud din, evel pa vent sklavezed ar hleze ?
27. Perag eo bet fellet dit tehi heb gouzoud din, ha n'eh-eus ket e zisklêriet din, evid ma'z ajen d'az ambrouga gand levenez, ha kanaouennou, ha taboulinou, ha telennou ?
28. N'eh-eus ket va lezet zoken da boki d'am mibien ha d'am merhed. Er hiz a rafe eun diskiant eh-eus greet : ha bremañ,

29. e hellfe va dorn disteurel an droug dit. Hogen Doue ho tad en-deus deh lavaret din : Diwall na liviri netra a zichek da Jakob.

30. Bez' e felle dit marteze mond etrezeg da dud, hag ez-poa c'hoant da zistrei da di da dad. Hogen perag eh-eus-te laeret va doueed ?

31. Ha Jakob a lavaras dezañ : Mar don eet kuit heb gouzoud dit, eo o veza ma em-eus bet aon n'az-pije kemeret da verhed diganen dre nerz.

32. Hogen diwar-benn al laeroñsi a damallez din, gand piou bennag e kavi da zoueed, ra vezo lazet dirag or breudeur. Klask piz, ha kemer kement a gavi dit ganen. O lavaroud kement-se, ne ouie ket penaoz Rachel he-doa laeret an idolou.

33. Laban eta a yeas e telt Jakob, hag e telt Lia, hag e telt an diou vatez, ha n'o havas ket. Mond a reas goude e telt Rachel.

34. Hogen hi he-doa kuzet buan an idolou dindan gouzer ar hañval, hag eh azezas warnezo : ha pa furche Laban dre an oll delt.

35. Hi a lavaras dezañ : Arabad ez afe droug em aotrou ma ne hellan ket sevel dirazañ ; rag ar pez a zeu peurvuia d'ar merhed a hoarvez ganen bremañ. Evel-se Laban a glaskas heb kavoud netra.

36. Neuze Jakob, eet droug ennañ, a reas ar rebech-mañ da Laban : Evid pe gwall, evid pe pehed e redez-te evel-se war va lerh,

37. Hag e teuez-te da furcha e-touez va oll annezou ? Petra eh-eus-te kavet euz a oll draou da di ? Laka hen amañ dirag va breudeur ha da vreudeur, hag i a varno etre me ha te.

38. Hag evid-se eo on bet ugent vloaz ganeg ? Da zeñved ha da hevr n'int ket bet hesk, ha n'am-eus ket debret tourzed da dropell.

39. N'em-eus ket diskouezet dit ar re a chome e dilerh al loened fero : pep koll a zistaolen dit ; ha te a ree din rei dit kement a oa bet laeret.

40. 'Hed an deiz e oan losket gand ar wrez, ha kropet 'hed an noz gand ar reo : hag ar housked a dehe diou va daoulagad.

41. Evel-se eo em-eus da zervijet en da di e-pad ugent vloaz, pevarzeg vloaz evid da verhed, ha c'hweh evid da dropellou : ha te eh-eus nevezet deg gwech va gopr.

42. Ma ne vijen ket bet skoazellet gand Doue va zad Abraham, ha gand doujañs Izaak, ez-pije marteze kaset kuit ahanon en noaz ? Hogen Doue en-deus sellet ouz va glahar hag ouz labour va daouarn, hag en-deus da hourdrouzet neizeur.

43. Ha Laban a lavaras dezañ : Va merhed ha va mibien, da dropellou ha kement a welez, a zo din. Petra a hellan-me da ober d'am merhed ha d'am mibien-vihan ?

44. Deuz eta ha greom kevredigez, evid ma vo da desteni etre me ha te.

45. Neuze Jakob a gemeras eur mên, hag e zavas e doare eur peulvan ;

46. Hag e lavaras d'e vreudeur : Degasit mein. Hag i o veza dastumet mein a reas eur hreh ; hag e tebrjont warnezañ.

47. Ha laban a halvas anezañ kreh an test ; ha Jakob bern an testeni, pep hini hervez dereadegez e yez.

48. Ha Laban a lavaras : Ar hreh-se a vezo test hirio etre me ha te : ha dre ze e oe galvet Galaad, da lavaroud eo, kreh an test.

49. Ra zello ha ra varno an Aotrou etrezom, pa vezim pellaet an eil diou egile.

50. Mar grez poan d'am merhed, ha mar kemerez gwragez all ohpenn, n'eus test all ebed euz or lavar nemed Doue, pehini a zo amañ hag a zell ouzom.

51. Lavaroud a reas c'hoaz da Jakob : Setu ar hreh hag ar mên am-eus savet etre me ha te,

52. a vezo test ; ar hreh hag ar mên-ze a vezo da desteni, ma tremenan e-biou evid mond etrezeg ennout, pe ma tremenez da-unan, gand ar c'hoant da ober droug din,

53. Doue Abraham, Doue Nakor ha Doue o zad-i ra varno etrezom. Jakob a douas eta dre zoujañs e dad Izaak :

54. Ha goude beza lazeta loened war ar menez, e halvas e vreudeur evid debri gantañ. Ha pa o-doe debret, e chomjont eno.

55. Hogen Laban o veza savet mintin-mad, a bokas d'e vibien ha d'e verhed hag a vennigas anezo ; hag e tistroas d'e vro.

XXXII. Pennad

Jakob a gas kannaded ha lod euz e vadou da Ezau

1. Jakob a gerzas ivez en e hent : hag êlez Doue a ziambrougas anezañ.
2. Pa o gwelas, Jakob a lavaras : Setu amañ kamp Doue : hag eh anvas al leh-se Mahanaim, da lavaroud eo, ar Hamp.
3. Neuze e kasas kannaded en e rank etrezeg e vreur Ezau, da zouar Seir, e bro Edom :
4. Hag e hourhemennas dezo, o lavaroud : Evel-henn e komzot ouz Ezau va breur : Setu petra a lavar da vreur Jakob : Evel eun diavêziad on bet e ti Laban, hag on chomet eno bete vremañ.
5. Bez' em-eus ejenned, hag azened, ha deñved, ha mevelou, ha mitizien : ha kas a ran bremañ kannad etrezeg va aotrou, evid ma kavin trugarez dirazañ.
6. Ar gannaded a zistroas da gavoud Jakob, hag a lavaras dezañ : bet om etrezeg da vreur Ezau, ha setu-eñ a zired war da arbenn gand pevar-hant den.
7. Spontet-braz e oe Jakob : hag en e spont e rannas e diou vandenn an dud a oa gantañ, hag ivez an tropellou, hag an deñved, hag an ejenned, hag ar hañvaled.
8. O lavaroud : Mar teu Ezau da stourm ouz unan euz ar bandennou, ha mar kann anezi, eben a chomo hag a vezo saveteet.
9. Ha Jakob a lavaras : Doue va zad Abraham, ha Doue va zad Izaak, Aotrou, te pehini eh-eus lavaret din : Distro d'az pro ha d'al leh e pehini out bet ganet, hag e rin vad dit :
10. Ne zellezan ket an disterra euz da drugareziou, nag ar wirionez eh-eus sevenet e-keñver da zervijer. Treuzet em-eus ar ster Jourdan-mañ, ha n'em-boa neuze nemed eur vaz, ha bremañ e tistroan gand diou vandenn.
11. Tenn ahanon euz a zorn va breur Ezau ; rag aon braz em-eus razañ ; aon am-eus, pa zeuio, na gannfe ar vamm gand ar vugale.
12. Lavaret eh-eus din penaoz e ri vad din, hag e paoti va gouenn evel trêz ar mor, na heller ket o niveri, kement zo anezo.
13. Goude beza kousket eno en noz-se, Jakob a dennas euz a gement en-doa, lod da rei d'e vreur Ezau.
14. Daou-hant gavr, hag ugent bouh, daou-hant dañvadez, hag ugent tourz ;
15. Tregont kañvalez nevez-hal gand o re vihan, daou-ugent buoh, hag ugent taro, ugent azenez ha deg azenig.
16. Hag eñ a lakaas e vevelou d'o has, pep tropell an eil goude egile, hag e lavaras d'e vevelou : Kerzit em raog, ha list hed etre eun tropell hag egile.
17. Hag eñ a hourhemennas d'ar henta o lavaroud : Mar kejez ouz va breur Ezau, ha mar goulenn diganez : Da biou out-te ? pe, da beleg ez ez ? pe, da biou eo al loened-se a gasez en da raog ?
18. Te a lavaro : Da Jakob da zervijer int, pehini o has evid o rei da Ezau va Aotrou : hag eñ e-unan a zeuy war ol lerh.

19. An heveleb gourhemenn e roas d'an eil, d'an trede, ha d'ar re oll a gase an tropellou, o lavaroud : En heveleb doare e komzot ouz Ezau, pa en em gavfot gantañ.

20. Hag e leverot c'hoaz : Jakob da zervijer a zeu ivez war ol lerh : rag eñ a lavare ennañ e-unan : e habaskaad a rin gand ar roiou a ya em raog, ha goude-ze e welin anezañ, ha marteze en-devezo truez ouzin.

21. Ar roiou eta a yeas e raog Jakob ; hogen eñ a dremenas an noz-se er hamp.

22. Hag o veza savet mintin-mad, e kemeras e ziou wreg, hag o diou vatez, gand e unneg mab, hag e treuzas gwe² Jakob.

23. Ha goude beza tremenet kement a oa dezañ,

24. E chomas e-unan : ha setu eun den o tond, a hourenas outañ beteg ar mintin.

25. Ha pa welas hemañ penaoz na helle ket e drehi, e lakaas e zorn war nervenn morzed Jakob, hag he dizehas raktal.

26. Hag e lavaras dezañ : Va lez da vond ; rag setu tarz an deiz. Ha Jakob a lavaras dezañ : N'az lezin ket da vond, ken n'az-pezo va benniget.

27. Hag hemañ a lavaras dezañ : Pe ano out-te ? Hag eñ a lavaras : Jakob.

28. Hag an êl a lavaras : Hiviziken ne vezi mui anvet Jakob, hogen Izrael ; rag mar dout bet kreñv ouz Doue, pegement e vezi kreñvoh ouz an dud ?

29. Ha Jakob a reas ar goulenn-mañ outañ, o lavaroud : Lavar din pe ano a reer ahanout. Hag eñ a lavaras : Perag e houlennez-te va ano ? Hag eñ a vennigas anezañ en heveleb leh.

30. Ha Jakob a anvas al leh-se Fanuel, o lavaroud: Gwelet em-eus Doue dremm-ouz-dremm, ha va ene a zo bet saveteet.

31. Pa oe tremenet gantañ Fanuel, e welas an heol o sevel : hogen kamm e oa euz a eun troad.

32. Rag-se eo na zebr ket bete-vremañ bugale Izarel na nervenn, pehini a zo goeñvet e morzed Jakob : o veza ma oe lakaet an dorn war nervenn e vorzed ha ma oe dizehet.

XXXIII. Pennad

Emwel etre Jakob hag Ezau

1. Neuze Jakob, o sevel e zaoulagad, a welas Ezau pehini a zeue, ha pevar-hant den gantañ : hag eñ a rannas bugale Lia, ha re Rachel, ha re an diou vatez.

2. Lakaad a reas an diou vatez hag o bugale er genta lodenn ; Lia hag he bugale en eil lodenn ; Ha Rachel ha Jozef en diweza lodenn.

3. Hag eñ a gerze war-lerh, hag a stouas d'an douar seiz gwech beteg ma oe tost d'e vreur.

4. Hogen Ezau a redas war ar-benn e vreur, hag a vriatas anezañ : hag o lammoud oh e houzoug, e pokas dezañ en eur ouela.

5. Hag o veza savet e zaoulagad, e welas ar gwragez hag o bugale, hag e lavaras da Jakob : Petra a fell d'ar re-ze ? Hag i a zo dit ? Hga eñ a lavaras : bugaligou int hag en-deus roet Doue d'az servijer.

6. Hag ar mitizien o veza tostaet gand o bugale, a stouas.

7. Lia a dostaas ivez gand he bugale, hag e stoujont ; ha d'an diweza oll e stouas Jozeb ha Rachel.

8. Hag Ezau a lavaras : Petra eo ar bandennou tud-se em-eus kavet em raog ? Ha Jakob a lavaras : Evid kaoud trugarez dirag va Aotrou em-eus o haset.

² gwe : roudour.

9. Hag Ezau a lavaras : Madou a-walh em-eus, va breur ; mir evidout ar pez a zo dit.
10. Ha Jakob a lavaras : Na vezez ket evel-se, me az ped ; hogen ma em-eus kavet trugarez dirag da zaoulagad, degemer va roig euz va daouarn. Rag gwelet em-eus da zremm, er hiz m'am-be gwelet dremm Doue ; bez eta trugarezuz em heñver.
11. Ha kemer ar bennoz a zegasan dit, hag en-deus roet din Doue, pehini a ro pep tra.
12. Hag eñ a lavaras : Kerzom kevred, ha me a yelo ganez en hent.
13. Ha Jakob a lavaras dezañ : Te a oar, va aotrou, penaoz em-eus ganen bugaligou, ha deñved ha saout keule³ ; ha ma o lakaan da gerzoud re vuan, va oll loened a varvo en eun devez.
14. Eet va aotrou a-raog e zervijer : ha me a yelo goustad war e lerh, dioh ma welin e hello va re vihan, beteg ma vezim eet da di va aotrou e Seïr.
15. Hag Ezau a lavaras : Da bedi a ran ma chomo da vihanna lod euz an dud a zo ganen, evid da ambrouga en da hent. N'eo ket red, eme Jakob : n'em-eus ezomm nemed euz a eun dra, kaoud trugarez dirazoud, va aotrou.
16. Ezau eta a zistroas da Zeïr en heveleb devez, dre an hent dre behini e oa deuet.
17. Ha Jakob a zeuas da Sokod. Hag o veza savet eno eun ti ha displeget e deltou, eh anvas al leh-se Sokod, da lavaroud eo teltou.
18. Ahano ez eas da Zalem, unan euz a gêriou ar Sichemited, e bro Kanaan ; hag e chomas 'nes kêr, goude ma oa distroet euz a Mezopotamia ar Siried.
19. Hag eñ a brenas lod euz ar park e pehini en-doa displeget e deltou, evid kant dañvad, digand Hemor, tad Sichem.
20. Hag o vezea savet eno eun aoter, e pedas warnezi an Doue kreñv-meurbed euz a Izrael.

XXXIV. Pennad

Skraperez Dina

1. Hogen Dina, merh Lia, a yeas er-mêz evid gweloud merhed ar vro-ze.
2. Ha Sichen, mab Hemor an Hevead, priñs ar vro, a welas hag a garas anezi. He skrapa a reas, hag e kouskas ganti, hag he gwallas.
3. E ene en em unanas ganti, hag e klaskas dre garantez he gounid, hag hi ankeniet.
4. Hag o vond da gavoud Hemor e dad : Va laka, emezañ, da zimezi gand ar plah yaouank-mañ.
5. Pa glevas Jakob kement-se, o veza n'edo ket e vibien er gêr, ha ma edont er peuri, o tiwalloud o loened, e tavas ken ma oent distroet.
6. Koulskoude Hemor, tad Sichem, a zeuas evid komz ouz Jakob.
7. Setu mibien hemañ a zeue euz ar park ; hag o veza klevet petra a oa c'hoarvezet, ez eas eun droug braz enno, evid an dra vezuz en-doa greet Sichem da Izrael, hag evid an torfed ma oa kirieg, o walla merh Jakob.
8. Rag-se Hemor a gomzas outo, o lavaroud : Ene va mab Sichem a zo staget stard ouz hini ho merh : roit hi eta dezañ da wreg.
9. Dimezom an eil gand egile : roit ho merhed deom, ha kemerit or merhed-ni.
10. Chomit ganeom : an douar-ze a zo en ho peli ; labourit eñ, gwerzit eñ, ha bezit perhenn dezañ.

³ keule : saout o rei lêz d'o leueou.

11. Hogen Sichen a lavaras da dad ha da vreudeur ar plah yaouank : Ra gavint trugarez dirazoh, ha me a roy deoh ar pezh a gerot.

12. Kreskit heh argourou, ha goulennit roou ; ha me a roy deoh a galon vad ar pezh a houlennot : roit hepken ar plah-se din da wreg.

13. Mibien Jakob a lavaras da Zichem ha d'e dad, evid e douella, hag en abeg da vezegez o hoar :

14. N'hellom ket ober ar pezh a houlennez,, na rei or c'hoar da eun den diemwadet : eun dra fall eo hag a zo berzet en on touez.

15. Hogen ni a hell ober kevredigez ganeoh diwar-benn kement-se, mar fell deoh beza heñvel ouzom, hag emwada an oll wazed en ho touez.

16. Neuze e roim deoh or merhed, hag e kemerim ho re, hag e chomim ganeoh, ha ne vezim nemed eur bobl.

17. Hogen ma ne fell ket deoh beza emwadet, ni a gemero or merh, hag ez aim kuit.

18. Ar hinnig-se a oe aotreet gand Hemor, ha gand Sichen e vab.

19. Hag an den yaouank-se ne zaleas ket pelloh ober ar pezh a houlenned digantañ ; rag karoud a ree stard ar plah yaouank. Hag eñ a oa an hini a brized muia e oll di e dad.

20. Hemor ha Sichen a yeas da borz kêr, hag a gomzas evel-henn ouz ar bobl :

21. An dud-se a zo habask, hag a fell dezo chom ganeom : ra raint o gounid en douar-mañ ha ra labourint anezañ ; braz ha ledan eo, a hounideien en-deus ezomm. Ni a gemero o merhed da wragez hag a roy dezo or re.

22. N'eus nemed eun dra o viroud ouz eur mad ker braz : red eo deom emwada or gwazed, hervez kiz ar bobl-se.

23. Hag o danvez, o chatal, ha kement o-deus a vezo deom. Aotream hepken kement-se dezo, hag e chomim kevred, ha ne raim nemed eur bobl.

24. Kement-se a oe aotreet gand an oll, hag an oll wazed a oe emwadet.

25. Ha setu, d'an trede deiz, pa oa ar boan en he brasa, Simeon ha Levi, mibien Jakob, ha breudeur Dina, o veza kemeret beb a gleze, a yeas e kêr gand herrder, hag a lazas an oll wazed.

26. Laza a rejont ivez Hemor ha Sichen, hag e tegasjont ganto o hoar Dina euz a di Sichen.

27. Goude ma oa eet ar re-mañ kuit, mibien all Jakob en em daolas war ar re lazet ; hag e wastjont kêr en abeg d'an dismegañs greet d'o hoar.

28. Kemeroud a rejont o deñved, o zaout, o azened, kement a oa en tiez, ha kement a oa er parkou.

29. Kas a rejont ivez ganto da sklaved o bugale hag o gwrazez.

30. Goude ma oa peurhreet an dra-ze gand kement a herrder, Jakob a lavaras da Zimeon ha da Levi : Va zrubillet hoh-eus, ha va lakaet da veza kasauz d'ar Gananeed ha d'ar Ferezeed pere a chom er vro-mañ. Ni a zo nebeud a dud : i en em zastumo hag a dago ahanon, ha me a vezo kollet, ha va oll dud ganen.

31. Hag i a lavaras : Hag i a dlee gwalla evel-se or c'hoar ?

XXXV. Pennad

Jakob a ya da Vethel. Izaak a varv.

1. Hogen Doue a lavaras da Jakob : Sao ha pign da Vethel : chom eno ha gra eun aoter d'an Doue a zo en em ziskouezet dit pa dehes diou da vreur Ezau.

2. Hogen Jakob o veza dastumet oll dud e di, a lavaras : Taolit pell diouzoh an doueeou a-ziavêz bro a zo en ho kreiz : en em nêtaït ha gwiskit dillad all.
3. Savit, ha pignom da Vethel, evid ober eun aoter da Zoue, pehini en-deus va zelaouet e deiz va glahar, hag en-deus va ambrouget en hent.
4. Rei a rejont eta dezañ an oll zoueed a-ziavêz bro o-doa, hag al lagadennoù aour a oa ouz o diskouarn ; ha Jakob o huzas en douar dindan eur wezenn terebigt⁴ a zo a-dreñv kêr.
5. Ha pa oent en em lakaaet en hent, spont Doue en em astennas war ar hêriou tro-war-dro, ha ne gredjont ket mond war-lerh ar re-mañ pa'z ejont kuit.
6. Jakob eta, hag an oll bobl a oa gantañ, a zeuas da Luza, lesanvet Bethel, a zo bro Kanaan.
7. Sevel a reas eno eun aoter, hag eh anvas al leh-se “Ti-Doue“, o veza ma oa eno en em ziskouezet Doue dezañ, pe dehe dioh e vreur.
8. En heveleb amzer e varvas Debora, magerez Rebekka, hag hi a oe beziet e traon Bethel, dindan eun dervenn. Hag al leh-se a oe anvet dervenn al leñv.
9. Hogen Doue en em ziskouezas adarre da Jakob abaoe ma oa distroet euz a Vezopotamia ar Siried, hag a vennigas anezañ,
10. O lavaroud : Hiviziken ne vezi mui anvet Jakob, hogen Izrael a vo da ano. Hag eñ a halvas anezañ Izrael.
11. Doue a lavaras ivez dezañ : Me eo an Doue ollhalloudeg ; kresk ha paot ; broadou ha poblou a zeuy ahanout ; ha roueed a zavo euz da groazell.
12. An douar am-eus roet da Abraham ha da Izaak, a roin dit ha d’az kouenn da houde.
13. Ha Doue a yeas kuit dioutañ.
14. Hogen Jakob a zavas eur peulvan mên el leh e pehini en-doa Doue komzet outañ ; gwin a ginnigas warnezañ, hag e holoas a eoul.
15. Hag e halvas al leh-se Bethel.
16. Goude ma oa eet ahano, e teuas en nevez-amzer d’an douar a gas da Efrata : hag eno o veza Rachel e poan vugale,
17. Dre ma oa diêz dezi genel, en em gavas tohor. Hag an amiegez a lavaras dezi : N’az-pet ket a aon, rag ar mab-mañ az-pezo adarre.
18. Hogen Rachel o weloud heh ene o vond kuit gand ar boan, hag ar maro o tostaad, a anvas he mab Benoni, da lavaroud eo, mab va gloaz. Hogen e dad a anvas anezañ Beñjamin, da lavaroud eo, mab an dorn dehou.
19. Rachel eta a varvas, hag a oe beziet en hent a gas da Efrata a zo ivez Bethleem.
20. Jakob a zavas eur peulvan war he bez. Henez eo peulvan bez Rachel, a weler c’hoaz bremañ.
21. Goude ma oe eet ahano, e tisplegas e delt en tu all d’al leh anvet Tour an tropell.
22. Ha pa chome er vro-ze, Ruben a yeas hag a gouskas gand Rala, serh e dad ; ha ne hellas ket e guzas outañ. Hogen Jakob en-doa daouzeg mab.
23. Mibien Lia ; Ruben, ar henta ganet, ha Simeon, ha Levi, ha Judaz, hag Isakar, ha Zabulon.
24. Mibien Rachel ; Jozef ha Beñjamin.
25. Mibien Bala, matez Rachel ; Dan ha Neftali.
26. Mibien Zelfa, matez Lia ; Gad hag Aser. Ar re-ze eo mibien Jakob, pere a zo bet ganet e Mezopotamia ar Siried.

⁴ terebignt : “thérébinthe“ e galleg.

27. Neuze Jakob a yeas da gavoud Izaak e dad e Mambre, e kêr Arbe, anvet ivez Hebron, e peleh e oa chomet e-giz diavêzidi Abraham hag Izaak.

28. Ha deizioù Izaak a oe euz a nao-ugent vloaz ;

29. Hag o veza koazet gand an oad e varvas. Ha koz ha leun a zeizioù e oe lakaet⁵ gand e bobl ; hag Ezau ha Jakob e vibien a vezias anezañ.

XXXVI. Pennad

Gwragez ha mibien Ezau

1. Setu amañ nested Ezau a zo ivez Edom.
2. Ezau a gemeras gwragez e-touez merhed Kanaan ; Ada, merh Elon, Hetead, hag Oholimaba, merh Ana, merh Sebeon, Hetead :
3. Basemat ivez, merh Izmael ha c'hoar Nabajot.
4. Ada a hanas Elifaz : Basemat a hanas Rahuel.
5. Oholimaba a hanas Jehus, hag Ibelon, ha Kore. Ar re-ze eo mibien Ezau, a zo ganet dezañ e bro Kanaan.
6. Hogen Ezau a gemeras e wragez, hag e vibien, hag e verhed, hag oll dud e di, hag e zanvez, hag e loened, ha kement a helle da gaoud e bro Kanaan ; hag ez eas en eur vro all, hag e pellaas diou e vreur Jakob.
7. Rag pinvidig-braz e oant, ha ne hellent ket chom o-daou kevred ; hag an douar e pehini edont evel diavêzidi ne helle ket o derhel en abeg d'o loened.
8. Ezau, anvet ivez Edom, a yeas da chom war menez Seïr.
9. Ha setu amañ nested Ezau, tad an Edumeed, war menez Seïr.
10. Setu anoiou e vibien : Elifaz, mab Ada, gwreg Ezau ; Rahuel, mab Bazemath a oe ivez e wreg.
11. Ha mibien Elifaz a oe Teman, Omar, Sefo, ha Gatam, ha Senez.
12. Tamna a oa serh Elifaz, mab Ezau, hag a hanas dezañ Amalek : ar re-ze a oa mibien Ada, gwreg Ezau.
13. Ha setu mibien Rahuel : Nabayh ha Zara, Samma ha Meza : ar re-ze eo mibien Basemath, gwreg Ezau.
14. Ar re-mañ a oa ivez mibien Oholibama, merh Ana, merh Sebeon, gwreg Ezau, hag he-deus ganet dezañ, Jehus, hag Ihelon, ha Kore.
15. Setu ar briñsed e-touez mibien Ezau. Mibien Elifaz, kenta ganet Ezau ; dug⁶ Teman, dug Omar, dug Sefa, dug Senez,
16. Dug Kore, dug Gatam, dug Amalek : ar re-ze eo mibien Elifaz e bro Edom, hag ar re-ze mibien Ada.
17. Setu ivez mibien Rahuel, mab Ezau : dug Nahat, dug Zara, dug Samma, dug Meza : ar re-ze eo priñsed Rahuel e bro Edom : ar re-ze eo mibien Basemat, gwreg Ezau.
18. Setu ivez mibien Oholibama, gwreg Ezau : dug Jehus, dug Ihelon, dug Kore : ar re-ze eo duced Oholibama, merh Ana, ha gwreg Ezau.
19. Setu mibien Ezau, a zo ivez Edom, ha setu an duced anezo.
20. Setu amañ mibien Seïr, an Horread, a chome neuze er vro-ze : Lotan, ha Sobal, ha Sebeon, hag Ana,
21. Ha Dison, hag Eser, ha Disan : ar re-ze eo duced Horreed, mibien Seïr, e bro Edom
22. Mibien Lotan a oe Hori hag Heman : ha c'hoar Lotan a oa Tamna.

⁵ lakaet : "lekeat" er skrid orin. "e oe dastumet »

⁶ dug : = penn eur meuriad.

23. Ha setu mibien Sobal : Alvan, ha Manahat, hag Ebat, ha Sefo, hag Onam.
 24. Ha setu mibien Sebeou : Aia hag Ana. An Ana-ze eo a gavas doureier tomm er goueleh pa oa o tiwalloud azened Sebeon, e dad.
 25. Da vab en-doe Dison, ha da verh Oholimaba.
 26. Ha setu mibien Dison : Hamdan, hag Eseban, ha Jetran, ha Karan.
 27. Setu mibien Eser : Balaan, ha Zavan, hag Akan.
 28. Setu mibien Disan : Hus hag Aran.
 29. Setu priñsed an Horreed : Dug Lotan, dug Sebal, dug Sebeon, dug Ana,
 30. Dug Dison, dug Eser, dug Disan. Ar re-ze eo duged an Horreed, pere o-deus renet e bro Seïr.
 31. Hogen ar roueed a renas e bro Edom, a-barz ma o-doe eur roue bugale Izrael, a oe ar re-mañ ;
 32. Bela, mab Beor ; hag e gêr a oe anvet Denaba.
 33. Hogen Bela a varvas, ha Johab, mab Zara a Vosra, a renas en e houde.
 34. Ha pa oe maro Zobab, Husam euz a vro an Temanited a renas en e houde.
 35. Pa oe maro hemañ...
- (Bet trohet ar peurrest)*

XXXVII. Pennad

Jozef a zo gwerzet gand e vreudeur

1. Hogen Jakob a chomas e bro Kanaan, e pehini e oa bet e dad evel eun diavêziad.
2. Setu ar pez a zell ouz e dud. Jozef, d'an oad a hwezeg vloaz, ha pa n'edo c'hoaz nemed evel eur bugel, a ziwalle an tropell gand e vreudeur ; bez' edo gand mibien Bala ha re Zelfa, gwragez e dad. Hag eñ a damallas e vreudeur dirag e dad euz a eur gwall ar brasa.
3. Izrael a gare Jozef dreist e oll vibien, dre an abeg ma oa bet ganet dezañ hag eñ koz ; hag eñ en-doa dezañ eur zae varellet.
4. E vreudeur o weloud penaoz o zad a gare anezañ dreist e vibien all, a zeuas d'e gasaad, ha ne hellent mui komz outañ gand habaskted.
5. C'hoarvezoud a reas ivez ma tanevellas d'e vreudeur eun huñvre en-doa bet ; hag an dra-ze a oe abeg da eur brasoh kas c'hoaz.
6. Rag eñ a lavaras dezo : Selaouit an huñvre em-eus bet.
7. Me a gave din penaoz e oam oh endramma er park ; e savas va malan hag e chomas en e zav ; ha penaoz ho malanou-c'hwi, pere a oa tro-war-dro, a azeule va malan-me.
8. Hag e vreudeur a lavaras dezañ : Hag or roue e vezi-te ? Ha plega a raim dindan da veli ? An huñvreou-ze hag ar homzou-ze a greskas an erez hag ar has o-doa outañ.
9. Eun huñvre all en-doe, hag a zanevellas d'e vreudeur, o lavaroud : Gwelet em-eus en huñvre, e-giz an heol, hag al loar, hag unneg steredenn, pere a azeule ahanon.
10. Goude ma en-doe danevellet kement-se d'e dad ha d'e vreudeur, e dad a grozas anezañ, hag a lavaras dezañ : Petra a fell dit e ve an huñvre-ze eh-eus bet ? Ha dond a raim-ni, me, da vamm, ha da vreudeur da azeuli ahanout war an douar ?
11. E vreudeur eta o-doa erez outañ : hogen e dad a wele kement-se ha ne lavare ger.
12. Pa oe eet breudeur Jozef da ziwalloud tropellou o zad, e chomjont e Sichem.

13. Hag Izrael a lavaras da Jozef : Da vreudeur a zo o tiwalloud an deñved e Sichem. Deus, ha me az kaso d'o havoud.

14. Setu-me, eme Jozef. Ha Jakob a lavaras dezañ : Kee, ha gwel mar dema pep tra e stad vad e-keñver al loened ; ha ro din da anaoud petra a hoarvez. Goude eta beza bet kaset euz a draonienn Hebron, e teuas da Zichem.

15. Eun den a gavas anezañ o vond hag o tond en eur park, hag a houlennas digantañ petra a glaske.

16. Hag eñ a lavaras : Va breudeur a glaskan ; lavar din peleh e tiwallont o zropellou.

17. Hag an den-ze a lavaras dezañ : Eet int kuit euz al leh-mañ, hag o hlevet emeus o lavaroud : Deom etrezeg Dothain. Jozef eta a gerzas war-lerh e vreudeur, hag a gavas anezo e Dothain.

18. Pa welas ar re-mañ anezañ a-bell, hag a-barz ma oa deuet tost dezo, e vennjont e laza ;

19. Hag e leverjont an eil d'egile : Setu e teu an huñvreer.

20. Deuit, lazom eñ, ha taolom eñ er puñs koz-se, hag e livirim : eul loen gouez en-deus e zispennet. Ha neuze e vezo gwelet da betra e vezo bet mad dezañ e huñvreou.

21. Hogen Ruben o klevoud kement-se, a glaske e denna euz o daouarn, hag a lavaras dezo :

22. Na lazit ket anezañ, ha na skuillit ket e wad ; hogen taolit eñ er puñs seh-se, a zo er goueleh, ha mirit ho taouarn dinamm. Hogen kement-se a lavare gand ar c'hoant en-doa da denna Jozef euz o daouarn, ha d'e rei adarre d'e dad.

23. Kerkent eta ma oa deut Jozef e-kichenn e vreudeur, e tennjont digantañ e zae hir ha marellet,

24. Hag e lakajont anezañ er puñs koz, e pehini ne oa ket a zour.

25. Hag o veza azezet evid debri bara, e weljont Izmaelited a dremene hag a zeue euz a Halaad, evid mond d'an Ejipt, gand kañvaled a zouge louzou c'hwez-vad, ha rousin⁷, ha mir.

26. Neuze Judaz a lavaras d'e vreudeur : Petra a dalvezo deom beza lazet or breur, ha beza kuzet e wad ?

27. Gwell eo deom e werza d'an Izmaelited, ha ne zaotrim ket on daouarn : rag or breur hag or hig eo. E vreudeur a roas o grad d'ar peza lavare.

28. Ha pa'z ee e-biou ar varhadourien Madianited, e tennjont Jozef euz ar puñs, hag e werzjont anezañ d'an Izmaelited evid ugent peza arhant. Hag ar re-mañ her hasas d'an Ejipt.

29. Ruben o veza distroet d'ar puñs, ne gavas mui ar bugel.

30. Ha beza roget e zillad, ez eas da gavoud e vreudeur, hag e lavaras dezo : Ne welan mui ar bugel, ha peleh ez in-me ?

31. Hogen kemeroud a rejont sae Jozef, hag e livjont anezi e gwad eur menn gaor o-doa lazet.

32. He rei a rejont da eur re evid he has d'o zad ha lavaroud dezañ : Ar zae-mañ on-eus kavet ; gwel mar deo hini da vab, pe ma n'eo ket.

33. An tad o veza heh anavezet, a lavaras : Sae va mab eo ; eul loen fero en-deus e zebret, eun aneval en-deus lonket Jozef.

34. Ha Jakob a rogas e zillad, hag a wiskas eur zae reun ; gouela a reas war e vab pell amzer.

⁷ rousin : balzam.

35. E vugale oll en em zastumas evid terri nerz glahar o zad ; hogen ne fellas ket dezañ beza dihlaharet, hag e lavaras : Gouela ‘rin beteg ma tiskennin d’an ivernou etrezeg va mab, hag eñ a ouele bepred.

36. Ar Vadiamited a werzas Jozef en Ejipt da Butifar, spaz Faraon⁸, ha penn ar vrezelidi.

XXXVIII. Pennad

Bugale Judaz

1. En heveleb amzer Judaz o kuitaad e vreudeur, a ziskennas hag a droas etrezeg eun den euz a Odollam, anvet Hira.

2. Hag eno e welas merh eun den a Ganaan, anvet Sue, he hemeroud a reas da wreg, hag ez eas d’he havoud.

3. Houmañ a engehentas hag a hanas eur mab, a oa anvet Her.

4. O veza engehentet eun eil gwech, he-doe-hi eur mab hag a anvas Onan.

5. Eun trede mab a hanas-hi, hag a anvas Sela : ha pa oe ganet hemañ, eh ehanas da henel.

6. Judaz a roas da Her, e genta ganet, eur wreg anvet Tamar.

7. Hogen Her, kenta ganet Judaz, a oa eun den fallagr dirag an Aotrou, hag e oe lakaet d’ar maro gantañ.

8. Judaz eta a lavaras da Onan e vab : Kee da gaoud gwreg da vreur, ha chom ganti evid ma roy gouenn d’az preur.

9. Onan pehini a ouie penaoz o vond da gavoud gwreg e vreur, ne vije ket dezañ a vugale, a skuille e had war an douar, evid na zavje ket a vugale d’e vreur.

10. Ha dre-ze an Aotrou a lazaz anezañ, o veza ma ree eun dra gwall-fall.

11. Rag-se e lavaras Judaz da Damar e verh-kaer : Bez intañvez e ti da dad, ken na gresko Sela va mab. Rag aon en-doa na varvje Sela evel e vreudeur. Tamar eta a yeas hag a chomas e ti he zad.

12. Hogen kalz deveziou goude, merh Sue, gwreg Judaz, a varvas. Hag hemañ goude gañv, ha goude beza en em zihlaharet, a bignas da Damna gand Hira, euz a Odollam, mesaer e dropell, evid gweloud touzerien e zeñved.

13. Roet e oe da anaoud da Damar penaoz he zad-kaer a dlee pignad da Damna evid touza e zeñved.

14. Houmañ, o veza lezet ganti he dillad intañvez, a gemeras eur ouel : hag o veza gwisket dillad all, eh azezas en eur hroazhent a gas da Damna : o veza ma oa kresket Sela, ha na oa ket bet roet dezi da ozah.

15. Pa he gwelas Judaz, e kredas penaoz e oa eur hast ; rag goloet he-doa he fenn, gand na vije bet anavezet.

16. Hag o tostaad outi, e lavaras dezi : Va lez da vond d’az kavoud (rag ne ouie ket e oa e verh-kaer). Hag hi a lavaras : Petra a roi-te din evid dond d’am havoud ?

17. Hag eñ a lavaras : Kas a rin dit eur menn gaor euz va zropellou. Hag hi a lavaras : Me a houzañvo ar pez a fell dit, mar roez eur gouestl din ken na gasi ar pez a ginnigez din.

18. Ha Judaz a lavaras : Petra a fell dit e roin dit da ouestl ? Hag hi a lavaras : Da walenn, da lagadenn-vreh, hag ar vaz a zalhez en da zorn. Ar vaouez eta en em strollas gantañ, hag a engehentas.

⁸ spaz Faraon : ofiser Faraon, hervez eur skrid e galleg.

19. Neuze e savas hag ez eas kuit. Hag o veza dilezet ar zae he-doa kemeret, e wiskas he dillad intañvez.

20. Hogen Judaz a gasas ar menn gaor dre zorn e vesaer a oa euz a Odolam, evid ma tigemerje ar gouestl en-doa roet d'ar vaouez . Hogen n'he havas ket.

21. Hag eñ a reas ar goulenn-mañ ouz an dud euz al leh-se : Peleh ema ar vaouez a oa azezet er hroazhent ? Hga e lavarjont : N'eus ket bet a hast el leh-mañ.

22. Distrei a reas etrezeg Judaz, hag e lavaras dezañ : N'em-eus ket he havet ; hag an dud euz al leh-se o-deus lavaret din, penaoz ne oa biskoaz azezet gast ebed eno.

23. Ha Judaz a lavaras : Miret eviti : hogen ne hell ket va zamalloud a hevier. Me am-eus kaset ar menn gaor em-boa kinniget, ha te n'eh-eus ket he havet.

24. Hogen a-benn tri miz e teujont da lavaroud da Judaz : Tamar, da verh-kaer, a zo kouezet e gastaouerez : gweloud a reer he hov o c'hweza. Ha Judaz a lavaras : degasit hi amañ ma vezo losket.

25. Pa gasent anezi d'ar hastiz, e kasas da lavaroud d'he zad-kaer : Euz ar gwaz da biou eo an dra-mañ em-eus engehentet. Anavez da biou eo ar walenn, al lagadenn-vreh, hag ar vaz-mañ.

26. Judaz o veza anavezet e ouestlout, a lavaras : Lealloh eo egedon, rag n'em-eus ket he roet da Zela, va mab. Koulskoude ne anavez ket anezi pelloh.

27. Hogen pa oa dare hi da wilioudi, e oe anavezet e oa daou vugel en he hov. Hogen pa zeujont er-mêz, unan anezo a ziskouezas e zorn, hag an amiegez a stagas eul liamm tane outañ, o lavaroud :

28. Hemañ a zeuy er-mêz ar henta.

29. Hogen hemañ o veza tennet e zorn, egile a zeuas er-mêz. Hag an amiegez a lavaras : Perag eh-eus-te torret ar voger ? Ha dre-ze eh anvas anezañ Farez.

30. Goude-ze e teuas e vreur, pehini en-doa al liamm tane ouz e zorn, hag hi a halvas anezañ Zara.

XXXIX Pennad

Jozef a zo lakaet en eun toull-bah

1. Jozef eta a oe kaset en Ejipt, ha Putifar Ejiptian, spaz Faraon, a oa e penn e arme, a brenas anezañ digand an Izmaelited pere o-doa e gaset.

2. Hogen an Aotrou a oa a-du gantañ, hag eñ a oa eüruz e kement a ree. Chom a ree e ti e vestr.

3. Pehini a wele ervad penaoz e oa an Aotrou a-du gantañ, ha penaoz e kement a ree e oa skozellet gand an Aotrou.

4. Jozef eta a gavas trugarez dirag e vestr, hag a zervijas anezañ. Hag o veza bet lakaet da benn da gement a oa en e di, e rene anezañ ha kement a oa bet lakaet etre e zaouarn.

5. An Aotrou a vennigas ti an Ejiptian en abeg da Jozef, hag a greskas e zanvez, ken en e di, ken war ar mêz.

6. Hag e vestr na gemere preder gand netra, nemed evid debri e voued. Jozef a oa kaer da weloud, hag euz a eun doare dudiuz.

7. Pell amzer goude, e vestrez a daolas he daoulagad war Jozef, hag a lavaras dezañ : Kousk ganen.

8. Jozef ne aotreas ket ober eun dra ker fall, hag a lavaras dezi : Setu va mestr en-deus lakaet pep tra etre va daouarn, ha ne oar ket zoken petra en-deus en e di.

9. N'eus netra a gement na ve ket em beli ha na ve ket roet din, nemedout, pehini a zo e wreg : penaoz eta e hellfen-me ober an droug-se, ha pehi a-eneb va Doue ?

10. Ar vaouez-se a heskine bemdez an den yaouank gand an heveleb komzou, hag eñ a zinahe en em rei d'ar hadaliez.
11. C'hoarvezoud a reas eun deiz penaoz Jozef o veza deuet en ti, a ree eul labour bennag heb na oa den eno.
12. E vestrez o veza kroget en e vantell, a lavaras dezañ : Kousk ganen. Neuze eñ o leuskel e vantell etre he daouarn, e tehas hag ez eas er-mêz.
13. Pa welas ar vaouez-se penaoz e oa chomet ar vantell etre he daouarn, ha penaoz e oa greet fae anezi,
14. E halvas an dud euz he zi, hag e lavaras dezo : Setu va ozah en-deus degaset amañ eun Hebreadd evid or mezekaad . Deuet eo d'am havoud evid kouska ganen. Hogen, pa on en em lakaet da harmi,
15. Ha pa en-deus klevet va mouez, en-deus laosket ar vantell e pehini e oan krog, hag eo tehet er-mêz.
16. Pa zistroas eta heh ozah d'an ti, e tiskouezas-hi ar vantell-ze dezañ, evel eun test euz he fealded ;
17. Hag e lavaras dezañ : Ar sklav hebreadd eh-eus kaset deom a zo falvezet dezañ ober dismegañs din.
18. Hogen pa en-deus va hlevet o harmi, en-deus laosket e vantell ganen, hag eo tehet er-mêz.
19. Mestr Jozef, re gredig e geriou e wreg, o veza klevet kement-se, a zavas droug braz ennañ :
20. Hag e lakaas kas Jozef er vah e pehini e talhed prizonerien ar roue. Hag eno e oe dalhet.
21. Hogen an Aotrou a oe gand Jozef, hag o kaoud truez outañ, hel lakaas da gaoud trugarez digand an hini a oa e penn ar vah.
22. Hag hemañ a lakaas dindan e veli kement hini a oa dalhet er vah-se. Ha ne ree netra nemed gand e vennoz.
23. Hag an hini a oa e penn ar vah ne gemere preder gand netra, o veza fiziet pep tra e Jozef : rag an Aotrou a oa gand hemañ hag a rene kement tra a ree.

XL. Pennad

Jozef a zispleg huñvreou daou ofiser Faraon

1. Goude kement-se e c'hoarvezas penaoz daou euz a ofiserien roue an Ejipt, e goper, hag e varaer a wall-reas e-keñver o aotrou.
2. Ha Faraon o sevel droug ennañ outo (rag unan anezo e oa e penn ar goperien, hag egile e penn ar varaerien),
3. A lakaas o had da vah kabiten e vrezelidi, e pehini edo dalhet Jozef.
4. Hogen an hini a oa e penn ar vah a lakaas anezo etre daouarn Jozef, pehini a zervije anezo. Tremenoud a reas eun nebeud amzer, hag i a chome bepred er vah.
5. O-daou o-doe en heveleb noz eun huñvre hag a zisklêrie ar pez a dlee c'hoarvezoud gand pep hini anezo.
6. Jozef, o veza eet d'o havoud diou ar mintin, hag o veza o gwelet nehet,
7. A houlennas outo, o lavaroud : Perag oh-hu nehetoh hirio, diou ho kweloud, eged n'oh boaz da veza ?
8. Hag i a lavaras : Eun huñvre on-eus bet, ha n'on-eus den evid he displega deom. Ha Jozef a lavaras dezo : Ha ne deo ket da Zoue displega kement-se ? Livirit din petra hoh-eus gwelet.

9. Penn ar goperien a zanevellas da genta e huñvre evel-henn : Me a wele dirazon eur winienn,
10. E pehini e oa tri skourr-gwini, a roas a nebeud e nebeud broñsennou, ha goudeze bleuñv, hag en diwez bod rezin dare.
11. Kop Faraon a oa em dorn. Me a gemeras ar bod rezin, hag o gwaskas er hop a zalhen, hag e rois ar hop da Faraon.
12. Ha Jozef a lavaras dezañ : Setu petra 'zispleg da huñvre. An tri skourr-gwini a zo tri devez c'hoaz,
13. Goude pere e teuy koun da Faraon euz da zervij, hag e lakay ahanout adarre en da garg kenta : ha te a roy dezañ ar hop hervez da garg, evel ma oas boazet kent da ober.
14. Az-pezh hepken koun ahanon pa vezi deuet mad, az-pezh truez ouzin ha ro an ali da Faraon da dennna ahanon euz ar vah-mañ.
15. O veza ma on bet skrapet dre laeroñsi euz a vro an Hebreed, hag on bet taolet amañ en eur vah ha me dinamm.
16. Penn ar varaerien o weloud penaoz en-doa Jozef displeget gand furnez an huñvre-ze, a lavaras dezañ : Ha me em-eus huñvreet penaoz em-boa war va fenn teir gest bleud ;
17. Ha penaoz er gest uhella e tougen kement a halle da ober eur baraer, hag e teue an evned da zebri anezo.
18. Ha Jozef a lavaras : Setu petra 'zispleg da huñvre. An teir gest a zo tri devez c'hoaz,
19. Goude pere Faraon a lakay troha da benn ha da grouga ouz eur groaz ; hag an evned a zispenno da gig.
20. An trede deiz goude a oa deiz ganedigez Faraon : hag eñ a reas eur banvez braz d'e zervijerien ; hag e-kreiz ar banvez en-doe koun euz an hini a oa e penn ar goperien, hag euz an hini a oa e penn ar varaerien.
21. Lakaad a reas adarre anezo en e garg, evid rei dezañ ar hop :
22. Lakaad a reas krouga egile. Hag evel-se e teuas da wir ar pezh en-doa disklêriet Jozef.
23. Koulskoude penn ar goperien n'en-doe mui a goun euz e zisklêrier, pa en em gavas en eurvad.

XLI. Pennad

Huñvreoù Faraon. Jozef enoret braz

1. A-benn daou vloaz Faraon en-doe eun huñvre. Eñ a gave dezañ ez edo en e zav war ribl ar ster.
2. A behini e save seiz buoh kaer ha lard-meurbed, hag a beure el lagadennou.
3. Seiz buoh all a zavas euz ar ster, hag i disleber ha treud-braz. Peuri a reent ivez war ribl an heveleb ster, e-kreiz ar geot glaz.
4. Hag ar re-mañ a zebras ar re gaer ha lard. Neuze e tihunas Faraon.
5. Hag eñ a gouskas adarre, hag en-doe eun huñvre all. Seiz tañvouezenn leun ha kaer a zave war eun heveleb korzenn.
6. Sevel a reas ivez seiz tañvouezenn all moan ha skaotet gand ar skarnil.
7. Hag ar re-mañ a lonkas ar re genta a oa ker kaer. Neuze e trihunas Faraon.
8. Ha pa oe deuet ar mintin, e savas spont ennañ, hag e reas klaskoud an oll ziouganerien hag an oll re fur euz an Ejipt : ha pa oent deuet, e tanevellas dezo e huñvre. Hogen hini anezo ne hellas he disklêria.

9. Neuze en diwez an hini a oa e penn ar goperien en-doe koun euz a Jozef, hag a lavaras da Faraon : me a anzav va fehed.
10. Ar roue o veza savet droug ennañ ouz e zervijerien, a hourhemennas va lakaad e bah penn ar vrezelidi, me ha penn ar varaerien.
11. Hag eno en heveleb nozvez or-boe beb a huñvre, hag a ziougane ar pezh a dlee c'hoarvezoud ganeom.
12. Bez' e oa eno eun Hebreid yaouank, mevel d'an hini a oa e penn an arme.
13. Ha pa or-boe danevellet dezañ on huñvreou, e lavaras deom kement a zo c'hoarvezet abaoe hed-a-hed : rag me a zo bet lakaet adarre em harg, hag egile a zo bet staget ouz eur groaz.
14. Raktal, ha dre urz ar roue, e oe tennet Jozef euz ar vah ; e oe trohet e vleo, ha nevezet e zillad, hag e oe kaset dirag ar roue.
15. Ha Faraon a lavaras dezañ : Huñvreou em-eus bet, ha den ne hell o disklêria : klevet em-eus penaoz e tisplegez anezo gand furnez.
16. Ha Jozef a lavaras : N'eo ket me, Doue eo hebzon a roio da anaoud traou eüruz da Faraon.
17. Faraon eta a lavaras ar pezh en-doa gwelet. Me a venne beza em zav war aod ar ster.
18. A behini e save seiz buoh kaer ha lard-meurbed, hag a beure ar geot glaz el lagenou.
19. Ha setu e teuas war-lerh ar re-mañ seiz buoh all ken displeber ha ken treud, n'em-eus biskoaz gwelet heñvel outo e douar an Ejipt.
20. Ar re-mañ a zebras hag a lonkas ar re genta ;
21. Ha koulskoude n'o-doa ket debret o gwalh diou o gweloud : hogen treud ha displeber e oent evel kent. Neuze e tihunis, hag e kouskis adarre.
22. Hag em-boe eun huñvre all. Seiz tañvouezenn leun ha kaer a zave war eun heveleb korzenn.
23. Sevel a reas ivez euz ar gorzenn seiz tañvouezenn all moan ha skaotet gand ar skarnil.
24. Hag ar re-mañ a lonkas ar re genta a oa ker kaer. Me em-eus danevellet va huñvre d'an diouganerien, hag hini anezo n'en-deus gellet he disklêria.
25. Ha Jozef a lavaras : Huñvreou Faraon n'int nemed unan : Doue en-deus diskouezet dezañ ar pezh a ray en amzer da zond.
26. Ar seiz buoh kaer, hag ar seiz tañvouezenn leun, a zo seiz bloavez a fonnder : an heveleb tra a ziskouez an diou huñvre.
27. Ar seiz buoh displeber ha treud a bignas war-lerh ar re-mañ hag ar seiz tañvouezenn voan ha skaotet gand ar skarnil, a zo seiz bloavez a naonegez a vezo goude.
28. Ha kement-se a hoarvezo er hiz-mañ.
29. Setu e teuy seiz bloavez a vezo fonnuz-meurbed dre oll vro an Ejipt.
30. Goude ar re-mañ e teuy seiz bloavez all a vezo ken difrouez, ma vezo ankounac'haet an oll fonnder a-gent ; rag an naonegez a wasto an douar oll.
31. Ha ker braz e vezo ar gernez, ma'z ay ganti ar fonnder braz da get.
32. Hogen an eil huñvre eh-eus bet, hag a zell ouz an heveleb tra, a ziskouez penaoz ger Doue a zo stard hag a vezo sevenet, hag a-barz nemeur.
33. Ra glasko eta a-vremañ ar roue eun den fur ha gouiziege, ha ra lakay anezañ e penn bro an Ejipt.
34. Evid ma lakay hemañ ofiserien en oll garteriou, pere a zastumo er solierou ar bempved lodenn euz a frouez an douar, e-pad ar seiz vloaz a fonnder a dle dond a-barz nemeur.

35. Ha ma vezo dastumet ha miret er hêriou an oll ed dindan beli Faraon.
36. Ha ma vezo miret evid ar seiz vloaz a naonegez a dle gveskel war an Ejipt, ha na vezo ket gwastet ar vro gand an dienez.
37. An ali-ze a oe kavet mad gand Faraon ha gand e oll vinistred.
38. Ha Faraon a lavaras dezo : Ha ni a hellfe kavoud eun den evel hemañ, hag a ve leun a spered Doue ?
39. Lavaroud a reas eta da Jozef : Pa en-deus Doue diskouezet dit kement eh-eus lavaret, ha me a hellfe kavoud eun den furroh egedout, pe heñvel ouzit ?
40. Te a vezo e penn va zi, oh da hourhemennou e sento ar bobl oll : ha ne vezin dreist-oll nemed war dron ar rouantelez.
41. Faraon a lavaras c'hoaz da Jozef : Setu e lakaan ahanout e penn oll vro an Ejipt.
42. Hag e tennas e walenn euz e zorn, hag he lakaas e dorn Jozef : hag eñ a wiskas dezañ eur zae lien lin moan, hag a lakaas eur gelhenn aour war-ro e houzoug.
43. E lakaad a reas da bignad en e eil karr, hag eun embanner a grie ma plegfe an oll ar glin dirazañ, ha ma ouezje an oll penaoz e oa lakaet e penn oll vro an Ejipt.
44. Ar roue a lavaras c'hoaz da Jozef : Me eo Faraon : den ne fiñvo e zorn pe e droad e oll vro an Ejipt, heb da hourhemenn.
45. Trei a reas ivez ano Jozef, hag e halvas anezañ, dioh yez an Ejipt, Salver ar bed. Rei a reas dezañ da wreg Aseneth, merh Putifar, beleg Heliopolis. Neuze Jozef a gerzas dre vro an Ejipt.
46. (Hogen tregont vloaz en-doa pa en em ziskouezas dirag Faraon) ; hag e reas an dro d'an oll broviñsou euz an Ejipt.
47. Ar seiz bloavez a fonnder a zeuas eta ; hag an ed o veza bet endrammet, a oe serret e solierou an Ejipt.
48. Dastumet e oe ivez e pep kêr an edou a oa e fonn.
49. Ha kement e oe a ed, ma oa puill evel trêz ar mor, ha ma en em gavas dreist peb ment.
50. Hogen a-barz ma teuas an naonegez, e oe ganet da Jozef daou vab, a roas dezañ Aseneth, merh Putifar, beleg Heliopolis.
51. Hag eñ a anvas e genta ganet Manasez, o lavaroud : Doue en-deus va lakaet da ankounac'haad va oll labouriou, ha ti va zad.
52. An eil a anvas Efraim, o lavaroud : Doue en-deus va lakaet da greski e bro va glahar ha va faourentez.
53. Goude eta ma oe tremenet ar seiz bloavez a fonnder an Ejipt,
54. E teuas war o lerh ar seiz bloavez a gernez, diouganet gand Jozef : naonegez a hoarvezas er bed oll : hogen e oll vro an Ejipt ez oa bara.
55. Hogen ar vro he-doa naon, hag ar bobl a grias etrezeg Faraon, o houlenn bara digantañ. Hag eñ a lavaras dezo : It etrezeg Jozef ha grit kement a lavaro deoh.
56. Koulskoude an naonegez a greske bemdez en douar oll : ha Jozef a zigoras an oll zolierou, hag a werze d'an Ejiptianed ; rag an naonegez a waske ivez anezo.
57. Hag euz an oll vroiou e teued d'an Ejipt evid prena boued, hag evid terri nerz an droug a ree an dienez.

XLII. Pennad

Breudeur Jozef a ya d'an Ejipt

1. Hogen pa glevas Jakob penaoz e werzed ed en Ejipt, e lavaras d'e vibien : Perag oh-hu lezireg ?

2. Klevet em-eus penaoz e werzer ed en Ejipt : diskennit di, ha prenit ar pezh a zo red evidom, evid ma hellim beva, ha na vezim ket bevezet gand an dienez.
3. Deg breur Jozef a ziskennas eta d'an Ejipt, evid prena ed ;
4. Rag Benjamin a oa bet dalhet er gêr gand Jakob, pehini a lavaras d'e vreudeur penaoz en-doa aon na hoarvezje droug gantañ en hent.
5. Mond a rejont d'an Ejipt gand ar re all pere a yee evid prena ed ; rag an naonegez a oa e bro Kanaan.
6. Ha Jozef a oa mestr e bro an Ejipt, ha ne werzed an ed d'ar poblou nemed dre e urz. Hag e vreudeur o veza stouet dirazañ,
7. Eñ a anavezaz anezo, hag o komz outo dichek evel ouz diavêzidi, e houlennas diganto : A beleh e teuit-hu ? Hag i a lavaras : Euz a vro Kanaan, evid prena peadra da veva.
8. Ha petra bennag ma anavezaz e vreudeur, ne oa ket anavezet ganto.
9. Hag o kaoud koun euz an huñvreou en-doa bet gwechall, e lavaras Jozef d'e vreudeur : Spierien oh ; evid gweloud al lehiou gwan euz ar vro oh deuet.
10. Ar re-mañ a lavaras dezañ : N'eo ket evel-se, Aotrou : hogen da zervijerien a zo deuet evid prena ed.
11. Mibien an heveleb den om oll : evel tud a beoh e teuom, ha da zervijerien n'o-deus mennoz fall ebed.
12. Ha Jozef a lavaras dezo : Gand eur mennoz all eo ; evid gweloud al lehiou digreñv euz ar vro oh deuet.
13. Hag i a lavaras : Ni, da zervijerien, a zo daouzeg breur, mibien an heveleb den e bro Kanaan. Ar yaouanka a zo gand on tad, hag egile n'ema mui war an douar.
14. Ema kement-se evel ma em-eus e lavaret : spierien oh.
15. Mond a ran bremañ da weloud petra oh. Dre yehed Faraon n'ez eot ket kuit ahann, ken na vezo deuet ho preur yaouanka.
16. Kasit unan ahanoh evid e gerhad : hogen c'hwi a chomo er vah, ken n'em-bezo anavezet anad mar deo gwir pe gaou ar pezh hoh-eus lavaret : anez, dre yehed Faraon, oh spierien.
17. Lakaad a reas eta o has d'ar vah a-hed tri devez.
18. Hogen an trede deiz o veza o zennet euz ar vah, e lavaras dezo : Grit ar pezh em-eus lavaret, hag e vevot ; rag me a zouj Doue.
19. Mar doh tud a beoh, unan euz ho preudeur a vezo ereet er vah ; hogen it kuit c'hwi, ha kasit d'ho tiez an ed hoh-eus prenet.
20. Ha degasit din ho preur yaouanka, evid ma hellin gouzoud mar deo gwir ho keriou, hag evid na varvot ket. Ober a rejont evel m'en-doa lavaret ;
21. Hag e leverjont an eil d'egile : Gand gwir abeg eo e houzañvom an dra-mañ, o veza ma on-eus pehet a-eneb or breur, hag o weloud anken e ene, pa bede stard ahanom, ha n'on-eus ket e zelaouet : rag-se eo eo bet kouezet warnom ar hlahar-ze.
22. Ruben, unan anezo, a lavaras : Ha n'em-eus ket lavaret deoh : Na behit ket ouz ar bugel-ze ; ha n'hoh-eus ket va zelaouet . Setu eo goulennet e wad diganeom.
23. Hogen ne ouient ket penaoz Jozef a gleve anezo, o veza ma komze outo dre henou eun disklêrier-yez⁹.
24. Jozef a bellaas evid eun nebeud amzer, hag a welas : hag o veza distroet, e komzas c'hoaz outo.
25. Lakaad a reas kregi e Simeon, hag e erea dirazo ; hag e hourhemennas d'e ofiserien karga leun o zeier a ed, ha lakaad arhant pep hini en e zah, goude beza roet dezo boued evid an hent : hag i a reas evel-se.

⁹ eun disklêrier-yez : eur jubennour.

26. Hag ar re-mañ a lakaas o ed war o azened ; hag ez ejont kuit.
27. Unan anezo o veza digoret e zah en ostaleri, evid rei boued d'e azen, a welas e arhant e genou e zah ;
28. Hag e lavaras d'e vreudeur : Distaolet eo va arhant din ; setu ema em zah. Hag i souezet ha spontet-braz, a lavaras an eil d'egile : Petra eo an dra-ze en-deus greet Doue deom ?
29. Pa oent deuet e ti Jakob o zad, e bro Kanaan, e tanevelljont dezañ kement a oa c'hoarvezet ganto, o lavaroud :
30. Aotrou ar vro-ze en-deus komzet dichek ouzom, hag en-deus or hemeret evid spierien er rouantelez.
31. Ni on-eus lavaret dezañ : Tud a beoh om, ha ne aozom spi ebed.
32. Daouzeg breur om bet ganet euz an heveleb tad. Unan n'ema mui war an douar, hag ar yaouanka a zo gand on tad e bro Kanaan.
33. Hag eñ en-deus lavaret deom : Evel-henn eh anavezin mar doh tud peohuz : list ganen unan euz ho preudeur ; kemerit ar boued a zo red evid ho tiez, hag it kuit.
34. Ha degasit din ho preur yaouanka, evid ma ouezin penaoz n'oh ket spierien, ma helloh kas ganeoh an hini a zo dalhet amañ er vah, ha ma hellot amañ hiviziken prena ar pezh a gerot.
35. Goude beza lavaret kement-se, ha pa houllont o zeier, e kavas pep hini anezo e arhant eret e genou e zah ; ha spontet oll e oent.
36. Ha Jakob o zad a lavaras dezo : Heb bugale hoh-eus va lakaet : Jozef n'ema mui war an douar ; Simeon a zo dalhet er vah, ha Benjamin a fell deoh da lemel diganen. Kement-se oll a zo kouezet warnon.
37. Ha Ruben a lavaras dezañ : Lez va daou vab, ma n'hen degasan ket dit. Laka anezañ etre va daouarn, ha me hen degaso dit.
38. Ha Jakob a lavaras : Va mab n'ez ay ket ganeoh. E vreur a zo maro, hag eñ a zo chomet e-unan. Mar tegouez gantañ droug ebed er vro ma'z it, e lakeot va fenn gwenn da vond er bez gand glahar.

XLIII. Pennad

Mibien Jakob a zistro d'an Ejipt gand Benjamin

1. Koulskoude an naonegez a waske direiz war ar bed.
2. Goude ma oe debret an ed o-doa degaset euz an Ejipt, e lavaras Jakob d'e vibien : Distroit, ha prenit deom eun nebeud boued.
3. Ha Judaz a lavaras : Disklêriet en-deus deom an den-ze, en eur doui, o lavaroud : Ne welot ket va dremm, ma ne zegasit ket ho preur yaouanka ganeoh.
4. Mar fell dit eta e gas ganeom, ez aim kevred, hag e prenim dit ar pezh a zo red.
5. Hogen ma ne fell ket dit, n'ez aim ket ; rag an den-ze, evel ma on-eus lavaret dit aliez, en-deus disklêriet deom : ne welot ket va dremm, heb ho preur yaouanka.
6. Hag Izrael a lavaras dezo : Em reuz eo hoh-eus disklêriet dezañ penaoz ho-poa eur breur all.
7. Hag i a lavaras : An den-ze en-deus goulennet diganeom doare on tud, a rumm da rumm : ma oa beo on tad, mar or-boa eur breur all : ha ni a lavaras dezañ hervez ma houlenne. Ha ni a helle gouzoud penaoz e lavarje deom : Degasit ho preur ganeoh ?
8. Judaz a lavaras ivez d'e dad : Lez ar bugel da zond ganen, evid ma'z aim en hent, ha ma hellim beva, ha na varvim ket, ni hag or bugaligou.

9. Em harg e kemeran ar bugel : goulenn anezañ diganen. Ma n'hen degasan ket, ha ma n'her roan ket dit adarre, e vezin da veza tamallet a behed da viken en da geñver.

10. Ma n'or-bije daleet kement, e vijem distroet a-vremañ evid an eil gwech.

11. Izrael o zad a lavaras eta dezo : Mar deo red kement-se, grit evel a gerot. Kemerit euz ar gwella frouez euz ar vro en ho listri, ha grit roou d'an den, eun nebeud rousin ha mel, ha storaks¹⁰, ha mirr, ha terebent¹¹, hag alamandez.

12. Kasit ivez ganeoh daou gement a arhant, ha kasit en-dro an hini hoh-eus kavet en ho seier, gand aon na ve bet greet dre fazi.

13. Kemerit ivez ho preur ganeoh, hag it da gavoud an den-ze.

14. Hogen ra lakay ahanoh va Doue ollhalloudeg da gaoud trugarez dirag an den-ze, ha ra laosko ganeoh ho preur a zo dalhet gantañ, ha Benjamin : koulskoude me a vezo e diouer hag evel pa n'em-be a vugale.

15. Ar re-mañ eta a gemeras ar roou, ha daou gement a arhant, ha Benjamin ; hag e tiskennjont d'an Ejipt, hag ez ejont da gavoud Jozef.

16. Pa welas Jozef anezo, ha Benjamin ganto, e hourhemennas da rener e di, o lavaroud : Laka an dud-se da zond en ti ; laz loened, hag aoz banvez, rag hirio e tleont leina ganen da greisteiz.

17. Hemañ a reas ar pezh a oa bet gourhemennet dezañ, hag a lakaas an dud-se da zond en ti.

18. Hag i, pa en em gavjont eno, a oe spontet, hag a lavaras an eil d'egile : En abeg d'an arhant a zo bet eet ganeom en dro genta en or zeier, eo o-deus bet ol lakaet da zond amañ ; evid teurel warnom tamall e gaou, hag ol lakaad e sklaverez, ni hag on ezen.

19. Dre-ze, pa edont toud ouz an nor, e tostajont ouz rener ti Jozef,

20. Hag e leverjont dezañ : Aotrou, selaou ahanom, ni az ped. Diskennet om amañ eur wech all evid prena boued.

21. Ha goude beza e brenet, pa oam deuet d'an ostaleri, ha pa or-boe digoret or zeier, e kavjom on arhant e genou ar seier ; hag e tegasom anezañ deoh bremañ en e bouez.

22. Degas a reom ivez arhant all evid prena ar pezh on-eus ezomm : hogen ne ouzom ket piou en-deus lakaet on arhant en or zeier.

23. Ha rener an ti a lavaras : Bezit e peoh, n'ho-pezet ket a aon. Ho Toue, ha Doue ho tad, en-deus roet deoh teñzoriou en ho seier ; rag kavet em-eus an arhant hoh-eus roet din. Hag e tegasas Simeon dirazo.

24. Hag eñ o lakaas da vond en ti ; kas a reas dour dezo, hag e walljont o zreid : rei a reas ivez boued d'o ezen.

25. Hogen i a aoze o roou, beteg ma teuje Jozef e tro ar hreisteiz ; rag klevet o-doa penaoz e tleent leina eno.

26. Pa zeuas eta Jozef d'e di, e kinnigjont dezañ ar roou a zallhent en o daouarn ; hag eh azeuljont anezañ o stoui beteg an douar.

27. Hag eñ o veza ivez o zaludet gand madelez, a houlennas diganto : Ho tad pehini a zo koz, hag hoh-eus lavaret din a zo beo, hag eñ a zo yah ?

28. Hag i a lavaras dezañ : On tad, da zervijer, pehini a zo c'hoaz beo, a zo yah : hag o stoui, eh azeuljont anezañ.

29. Hogen Jozef o sevel e zaoulagad, a welas Benjamin e vreur, mab e vamm e-unan, hag a lavaras : Hag hennez eo ho preur yaouanka, a behini hoh-eus komzet din ? Lavaroud a reas c'hoaz : Va mab, r'hen devezo Doue truez ouzit.

¹⁰ storaks : louzou c'hwez vad.

¹¹ terebent : pistach.

30. Hasta a reas, rag e galon a oa strafuillet diwar-benn e vreur, hag an daerou a darze ; hag o veza eet en e gambr, e ouelas.

31. Goude beza gwalhet e zremm, e tistroas ; hag oh en em zerhel, e lavaras : Lakait ar boued war an taoliou.

32. Lakaet e oe ar boued a du da Jozef, hag a du d'e vreudeur, hag a du d'an Ejiptianed pere a zebre kevred gantañ ; rag divennet eo d'an Ejiptianed debri gand an Hebreed, hag eun dra zaotr e vennont eun heveleb banvez.

33. Hag i a azezas dirag Jozef, an hena hervez e henañded, hag ar yaouanka hervez e oad, hag i a oe souezet-braz,

34. Pa gemerjont o lodennou digantañ, o weloud ez oa degouezet gand Benjamin al lodenn vrasa, en heveleb doare ma oa houmañ pemp gwech brasoh eged ar re all. Evel-se eh evjont gand Jozef hag o-doe o gwalh euz a bep tra.

XLIV. Pennad

Jozef a laka da redeg war-lerh e vreudeur

1. Hogen Jozef a hourhemennas da rener e di, o lavaroud : Karg leun seier an dud-se a ed, kement ha ma hello mond e-barz, ha laka arhant pep hini e genou e zah.

2. Ha laka va hop arhant e genou sah ar yaouanka, gand an arhant en-deus roet evid e ed. Hag evel-se e oe greet.

3. Hag antronoz da houlou-deiz, e oent lezet da vond kuit, i hag o ezen.

4. Eet e oant er-mêz euz a gêr, ha greet o-doa eun nebeud a hent, neuze Jozef a gemennas rener e di : Sao, emezañ, ha kee war-lerh an dud-se, ha p'az-pezo o faketa, lavar dezo : Perag hoh-eus-hu distaolet an droug evid ar mad ?

5. Ar hop hoh-eus laeret eo an hini e pehini eh ev va aotrou, ha gand pehini e tiougan : eur gwall dra hoh-eus greet.

6. Hemañ a reas ar peza a oa bet gourhemennet dezañ ; ha pa en-doe o faketa, e komzas outo hervez ar gourhemenn.

7. Hag ar re-mañ a lavaras : Perag e lavar on aotrou kement-se, ha ma kred-eñ o-divije e zervijerien greet eun droug ker braz ?

8. Degaset on-eus dit euz a vro Kanaan an arhant on-eus kavet e genou or zeier. Penaoz eta e hellfe beza or-be laeret aour pe arhant euz a di da aotrou ?

9. Piou bennag euz da zervijerien gand pehini e vezo kavet ar peza a glaskez, ra varvo ; ha ni a vezo sklaved d'on aotrou.

10. Hag eñ a lavaras dezo : Ra vezo greet hervez ho lavar : piou bennag gand pehini e vezo kavet, ra vezo sklav din, ha c'hwi a vezo didamall.

11. Diskenni a rejont eta raktal o zeier d'an douar, ha pep hini a zigoras e hini.

12. Hemañ a hwilias, o teraoui euz ar hosa beteg ar yaouanka, hag a gavas ar hop e sah Benjamin.

13. Ar re-mañ a rogas o dillad, a zammas a-nevez o ezen, hag a zistroas da gêr.

14. Ha Judaz a yeas ar henta gand e vreudeur dirag Jozef, pehini ne oa ket c'hoaz eet kuit euz al leh ma edo ; hag i oll en em strinkas kevred d'an douar dirazañ.

15. Ha Jozef a lavaras dezo : Perag eo bet falvezet ganeoh ober evel-se ? Ha ne ouzoh-hu ket penaoz n'eus den a ve heñvel ouzin evid an diouganerez ?

16. Ha Judaz a lavaras dezañ : Petra a livirim-ni d'am aotrou ? Peseurt digarez a hellim-ni da rei gand gwir ? Doue en-deus kavet fallagriez da zervijerien. Setu om oll sklaved va aotrou, ni hag an hini gand piou eo bet kavet ar hop.

17. Ha Jozef a lavaras : Doue ra viro na rin kement-se. Bezet sklav din an hini en-deus laeret va hop ; hogen, c'hwi, n'oh ket dalhet, hag it da gavoud ho tad.

18. Hogen Judaz o tostaad muioh ouz Jozef, a lavaras dezañ heb aon : Me az ped, va aotrou, lez da zervijer da lavaroud dit eur ger en da skouarn, ha na vuaneka ket ouz da zervijer ; rag goude Faron,

19. Te a zo va aotrou. Goulennet eh-eus da genta ouz da zervijerien : Ha beza hoh-eus-hu ho tad, pe eur breur all ?

20. Ha ni on-eus lavaret dit, va aotrou : Eun tad on-eus hag a zo koz, hag eur mab bihan dezañ, a zo bet ganet dezañ en e gozni : breur hemañ a-vamm a zo maro, hag e vamm n'he-deus lezet nemetañ ; hag e dad her har stard.

21. Ha te a lavaras d'az servijerien : Degasit eñ din, evid ma her gwelin.

22. Ha ni a lavaras dit, va aotrou : Ar bugel-ze ne hell ket pellaad dioh e dad ; rag mar pella dioutañ, hel lakay da vervel.

23. Ha te a lavaras d'az servijerien : Ma ne zeu ket ho preur yaouanka ganeoh, ne welot mui va dremm.

24. Pa oem eta distroet etrezeg on tad, da zervijer, e tanevellas dezañ kement ez-poa lavaret deom, va aotrou.

25. Hag on tad a lavaras deom : Distroit, ha prenit deom eun nebeud ed.

26. Ha ni a lavaras dezañ : Ne hellom ket mond. Mar tiskenn or breur yaouanka ganeom, ez aim kevred ; anez, ma ne zeu ket, ne gredim ket en em ziskoueza dirag dremm an den-ze.

27. Hag eñ a lavaras deom : C'hwi a oar penaoz va gwreg Rachel he-deus ganet daou vab din.

28. Unan anezo a yeas war ar mêz, hag e leverjot din : Eul loen en-deus e zebret : ha bete-vremañ n'eo ket bet gwelet.

29. Mar kasit ivez hemañ ganeoh, ha ma c'hoarvez eun droug bennag gantañ en hent, e kasot va fenn gwenn er bez gand glahar.

30. Ma'z an eta da gavoud va zad, da zervijer, ha ma ne vez ket ar bugel ganen, o veza ma talh e vuhez euz a vuhez hemañ,

31. Pa welo penaoz n'ema ket ganeom, e varvo ; ha da zervijerien a gaso e benn gwenn er bez gand glahar.

32. Ra vezin eta kentoh sklav dit, me pehini em-eus kemeret ar bugel dindan va harg, o lavaroud : Ma n'hen degasan, e vezin da veza tamallet a behed da viken e-keñver va zad.

33. Rag-se e chomin da sklav dit e-leh ar bugel, evid servija va aotrou, hag ar bugel a zistroio gand e vreudeur.

34. Rag ne hellan ket distrei etrezeg va zad, ma ne vez ket ar bugel ganen, gand aon na ven test va-unan euz ar hlahar a wasko war va zad.

XLV. Pennad

Jozef en em ro da anaoud d'e vreudeur, hag a gas da gerhad e dad.

1. Jozef ne helle mui en em zerhel dirag an oll dud a oa war e dro. Gourhemenni a reas eta o lakaad oll er-mêz, evid na vije diavêziad ebed, pa en em roje da anaoud d'e vreudeur.

2. Neuze, en eur ouela, e savas e vouez, a oe klevet gand an Ejiptianed ha gand oll dud ti Faraon.

3. Hag e lavaras d'e vreudeur : Me eo Jozef : ha beo e vev-eñ va zad ? E vreudeur ne helljont ket komz outañ, ker spontet e oant.

4. Jozef a gomzas outo gand madelez, hag a lavaras dezo : Denesait ouzin. Ha pa oent denesaet, me eo, emezañ. Jozef, ho preur, pehini hoh-eus gwerzet evid mond d'an Ejipt.
5. Na spontit ket, ha na vezit ket glaharet o veza ma hoh-eus va gwerzet evid beza degaset er vro-mañ ; rag evid ho savetei eo en-deus Doue va haset en ho raog d'an Ejipt.
6. Rag daou vloaz 'zo eo deraouet an naonegez war an douar : ha chom a ra c'hoaz pemp bloaz, e-pad pere ne vezo gellet nag arad, na medi.
7. Ha Doue en-deus va haset en ho raog evid ho miroud e buhez, hag evid ma hellot kaoud boued da veva.
8. N'eo ket dre hoh ali, hogen dre youl Doue on bet kaset amañ ; eñ eo en-deus va lakaet evel da dad da Faraon, da aotrou war e oll di, ha da briñs war oll vro an Ejipt.
9. Hastit, hag it da gavoud va zad, ha livirit dezañ : Setu petra a gemenn dit da vab Jozef : Doue en-deus va lakaet da aotrou war oll vro an Ejipt ; deus d'am havoud, ha na zale ket.
10. Ha te a chomo e douar Jesen : hag e vezi tost din, te ha da vibien, ha mibien da vibien, da zeñved, ha da zaout, ha kement tra eh-eus.
11. Hag eno az magin (rag an naonegez a bado c'hoaz pemp bloaz) gand aon na zeujes da zizeria, te ha da oll dud, ha kement tra eh-eus.
12. Setu ho taoulagad ha daoulagad va breur Benjamin a wel penaoz e komzan ouzoh gand va genou va-unan.
13. Danevellit d'am zad va oll hloar, ha kement hoh-eus gwelet en Ejipt. Hastit ha degasit eñ din.
14. En em deurel a reas Jozef ouz gouzoug Benjamin e vestr, evid e vriata ; ha Benjamin a ouelas ivez war e houzoug.
15. Poki a reas ivez d'e oll vreudeur, hag e ouelas war bep hini anezo : ha goude-ze e kredjont komz outañ.
16. Kement-se a oe klevet ha diskuillet e lez ar roue, hag e leverjont : Breudeur Jozef a zo deuet. Ha Faraon en em laouennaas, hag e oll dud gantañ.
17. Hag eñ a lavaras da Jozef rei ar gourhemenn-mañ d'e vreudeur : Sammit hoh ezen, hag it da vro Kanaan.
18. Ha degasit ahano ho tad hag hoh oll dud, ha deuit d'am havoud : ha me a roy deoh oll vadou an Ejipt, ha c'hwi a zebro mel ar vro.
19. Gourhemenn ivez dezo kemeroud kirri euz a vro an Ijipt, evid degas o bugale hag o gwragez, ha lavar dezo : Degasit ho tad, ha deuit afo.
20. Ha na zegasit netra euz hoh arrebeuri, rag oll vadou an Ejipt a vezo deoh.
21. Mibien Izrael a reas evel ma oe gourhemennet dezo, ha Jozef a lakaas rei dezo kirri, hervez gourhemenn Faraon, ha boued evid an hent.
22. Gourhemenni a reas ivez rei da bep hini anezo diou zae : hogen da Venjamin e roas tri-hant pez arhant ha pemp sae euz ar re gaerra.
23. Kas a reas ivez kemend-all a arhant hag a zaeou d'e dad : deg azen karget euz a oll vadou an Ejipt, ha kemend-all a azenezed a zouge ed ha bara evid an hent.
24. Kas a reas eta e vreudeur kuit, ha pa'z ejont en hent e lavaras dezo : Na vuannekait ket en hent.
25. Mond a rejont eta euz an Ejipt, hag e teujont da vro Kanaan, etrezeg Jakob o zad.
26. Hag e tanevelljont kement-mañ dezañ, o lavaroud : Jozef da vab a zo beo ; mestr eo war oll vro an Ejipt. Pa glevas Jakob kement-se ; e tihunas evel euz a eur housk kaled, ha koulskoude ne grede ket dezo.

27. En eneb i a zanevelle dezañ pep tra dioh reiz. Ha pa welas Jakob ar hirri, ha kement a zegase Jozef dezañ, e tiabafas,

28. Hag e lavaras : A-walh eo din mar deo c'hoaz beo va mab Jozef : mond a rin hag e welin anezañ kent ma varvin.

XLVI. Pennad

D'an Ejipt ez a Jakob

1. Izrael eta en em lakaas en hent, gand kement en-doa, hag a zeuas da buñs an Touadel : hag o veza lazet eno loened da Zoue e dad Izaak,

2. E klevas anezañ en eur weledigez e-pad an noz, hag a lavare dezañ : Jakob, Jakob. Hag eñ a lavaras : Setu-me amañ.

3. Ha Doue a lavaras dezañ : Me eo Doue kreñv-meurbed da dad, n'az-pezh ket a aon ; diskenn d'an Ejipt, rag eno az likin da benn da eur bobl vraz.

4. Ganez e tiskennin di, ha pa zistroi az tegasin ahano : Jozef ivez a lakay e zaouarn war da zaoulagad.

5. Hogen Jakob a zavas euz a-dal puñs an Touadel : hag e vibien a gasas anezañ gand o bugale hag o gwiragez er hirri en-doa degaset Faraon evid dougen an den koz,

6. Ha kement tra a oa dezañ e bro Kanaan ; hag eñ a zeuas d'an Ejipt gand e oll ouenn.

7. E vibien, e vugale-vihan, e verhed, ha kement a oa ganet anezañ.

8. Hogen setu anoioù mibien Izrael, pere a yeas e-barz an Ejipt, pa zeuas di gand e oll vugale : Ruben, e genta ganet.

9. Mibien Ruben : Henoc'h, ha Fallu, hag Hesron, ha Charmi.

10. Mibien Simeon : Jamuel, ha Jamin, hag Ahod, ha Jachin, ha Sohar, ha Saul, mab eur Gannaneadez.

11. Mibien Levi : Gerson, ha Kaat, ha Merari.

12. Mibien Judaz : Her, hag Onan, ha Sela, ha Farez, ha Zara. Hogen Her hag Onan a varvas e bro Kanaan. Ha mibien Fares a oe Hesron hag Hamul.

13. Mibien Isakar : Tola, ha Fua, ha Job, ha Semron.

14. Mibien Zabulon : Sared hga Elon, ha Jachelel.

15. Ar re-ze eo mibien Lia, he-doe e Mezopotamia ar Sired, gand Dina, he merh. Hed mibien hag he merhed a oa en oll tri ha tregont.

16. Mibien Gad : Sefion, hag Haggi, ha Suni, hag Esebon, hag Heri, hag Arodi, hag Areli.

17. Mibien Aser : Jamna, ha Jesua, ha Jesui, ha Beria, ha Sara o hoar. Mibien Beria : Heber ha Melkiel.

18. Ar re-ze eo mibien Zelfa, en-deus roet Laban da Lia e verh ; euz a Jakob e oant ganet ivez, ha c'hwezeg den e oant.

19. Mibien Rachel, gwreg Jakob : Jozef ha Benjamin.

20. Jozef en-doe daou vab e bro an Ejipt, a hanas dezañ Asenet, merh Putifar, beleg Heliopolis : Manase hag Efraim.

21. Mibien Benjamin : Bela, ha Bekor, hag Asbel, ha Gera, ha Naaman, hag Eki, ha Ros, ha Mofin, hag Ofim, hag Ared.

22. Ar re-ze eo mibien Rachel, ganet euz a Jakob ; pevarzeg den en oll.

23. Mab Dan : Husim.

24. Mibien Neftalin : Jasiel, ha Guni, ha Jeser, ha Sallem.

25. Ar re-ze eo mibien Bala, en-deus roet Laban da Rachel, e verh ; euz a Jakob e oant ganet, seiz den en oll.

26. Ar re oll a oa deuet d'an Ejipt gand Jakob, hag a oa ganet anezañ, heb niveri gwraze e vibien, a oa c'hweh den ha tri-ugent.

27. Ha mibien Jozef, pere a zo bet ganet e bro an Ejipt : daou zen. Evel-se an dud oll euz a di Jakob pere a zeuas d'an Ejipt, a oe euz a zeg ha tri-ugent.

28. Hogen Jakob a gasas Judaz en e raog etrezeg Jozef evid rei da anaoud dezañ eh errue, ha ma'z aje war e arbenn e douar Jesen.

29. Pa oe deuet Jakob di, Jozef a lakaas sterna ar hezeg ouz e garr, hag a yeas war e arbenn beteg eno : ha pa her gwelas, e lammas d'e houzoug, hag e vriatas anezañ en eur ouela.

30. Ha Jakob a lavaras da Jozef : Bremañ e varvin laouen pa em-eus gwelet ahanout, ha pa'z lezan beo war va lerh.

31. Neuze Jozef a lavaras d'e vreudeur, ha da oll dud e dad : Mond a ran da rei da anaoud kement-mañ da Faraon, hag e livirin dezañ : Va breudeur, ha tud va zad, pere a chome e bro Kanaan, a zo deuet d'am havoud.

32. Mesaerien deñved int, hag i a vag tropellou : degaset o-deus ganto o deñved, o ejenned, ha kement a hellent da gaoud.

33. P'ho kalvo eta Faraon, ha pa lavaro deoh : Petra eo ho preder ?

34. C'hwi a lavaro : Ni, da zervijerien, a zo mesaerien adaleg or yaouankiz betevremañ, ni hag on tadou. Kement-mañ a leverot, evid ma hellot chom e douar Jesen, rag an Ejiptianed a gasa an oll vesaerien deñved.

XLVII. Pennad

An Ejiptianed a werz d'ar roue o zropellou hag o douarou

1. Jozef eta a zanevellas kement-se da Faraon, o lavaroud : Va zad ha va breudeur, gand o deñved hag o ejenned, ha kement o-deus, a zo deuet euz a vro Kanaan : ha bremañ emaint e douar Jesen.

2. Hag eñ a gasas dirag ar roue pemp euz e vreudeur.

3. Ha Faraon a reas ar goulenn-mañ outo : Petra eo ho preder ? Hag i a lavaras : Ni, da zervijerien, a zo mesaerien deñved, ni hag on tadou.

4. Evid tremenoud eun nebeud amzer om deuet d'az pro, o veza n'eus ket a heot evid tropellou da zervijerien, ker braz eo an naonegez e bro Kanaan. Ni a houlenn ma roi urz ma chomo da zervijerien e douar Jesen.

5. Ar roue a lavaras eta da Jozef : Da dad ha da vreudeur a zo deuet d'az kavoud.

6. Douar an Ejipt a zo dirazout : laka i da chom er gwella leh, ha ro dezo douar Jesen. Ma anavezet en o zouez tud halloudeg, laka i e penn war va zropellou.

7. Goude-ze Jozef a ambrougas e dad etrezeg ar roue hag e gasas dirazañ. Ha Jakob a vennigas Faraon.

8. Hag ar roue o veza greet ar goulenn-mañ digantañ : Pe oad out ?

9. Eñ a lavaras : Deziou va zremenedigez a zo euz a zeg vloaz ha c'hweh-ugent, berr ha fall ; ha n'int ket eet beteg deziou tremenidigez va zadou.

10. Ha goude beza benniget ar roue, ez eas kuit.

11. Hogen Jozef a roas d'e dad ha d'e vreudeur ar gwella douar euz an Ejipt, Ramezez, evel m'en-doa gourhemennet Faraon.

12. Hag eñ a vage anezo gand oll di e dad, o rei da bep hini peadra da veva.

13. Rag ar bara a oa diouer anezañ er bed oll, hag an naonegez a waske war an douar, dreist-oll war an Ejipt ha war vro Kanaan.

14. Jozef a zastumas an oll arhant en-doa bet digand tud ar broiou-ze evid an ed en-doa gwerzet dezo, hag e kasas anezañ da deñzor ar roue.

15. Pa zeuas an dud da zioueri arhant evid prena ed, oll bobl an Ejipt a zeuas da gavoud Jozef, o lavaroud : Ro bara deom. Perag e varvom-ni dirazout o veza n'eus mui a arhant ?

16. Ha Jozef a lavaras dezo : Ma n'hoh-eus mui a arhant, degasit ho loened, ha me a roy deoh ed evito.

17. Pa o-doe degaset o loened, Jozef a roas ed dezo evid talvoudegez o hezeg, o deñved, o ejenned, hga o ezen : hag eñ a vagas anezo a-zoug ar bloaz-se evid kemm o loened.

18. Dond a rejont c'hoaz ar bloaz war-lerh, hag e leverjont dezañ : Ne guzim ket oh on aotrou penaoz eo dioueret on arhant deom, ha dioueret ivez ol loened : eun dra anad eo dit penaoz nemed or horvou hag on douarou, n'on-eus mui netra.

19. Perag eta e varvfem-ni dirazout ? Dit e vezim, ni hag on daouarou : pren ahanom da sklaved d'ar roue ha ro deom had, gand aon na chomfe an douar fraost, ma varv al labourerien.

20. Jozef a brenas eta oll zouarou an Ejipt, pep hini o werza e oll dra, en abeg d'an naonegez vraz : hag evel-se e lakaas Faraon da veza perhenn da oll zouar an Ejipt.

21. Gand e oll boblou, adaleg eur penn beteg eur penn all euz an Ejipt ;

22. Nemed douarou ar veleien, pere a oa bet roet dezo gand ar roue : rag roet e oe dezo ed euz a zolierou ar roue ; hag evel-se ne oe ket red dezo gwerza o douarou.

23. Neuze Jozef a lavaras d'ar bobl : Setu, war a welit, emaoñ da Faraon, c'hwi hag ho touarou. Kemerit had, hag hadit ho parkeier,

24. Evid ma hellot kaoud ed. Ar bempved lodenn a root d'ar roue, hag ar beder lodenn all a lezan ganeoh evid had, hag evid boueta ho tud, hag ho pugale.

25. Hag ar re-mañ a lavaras : Ema or zilvidigez eta etre da zaouarn. Ra zello hepken a druez on aotrou ouzom, ha ni a zervijo ar roue gand levenez.

26. Abaoe an amzer-ze bete-vremañ, e oll vro an Ejipt, e paeer d'ar roueed ar bempved lodenn ; deuet eo se da veza evel eul lezenn, nemed evid douarou ar veleien, pere a oe kuit euz ar garg-se.

27. Izrael a chomas eta en Ejipt, da lavaroud eo e douar Jesen, pehini a oa bet roet dezañ : hag eno e kreskas hag e paotas meurbed.

28. Hag eñ a vevas eno seiteg vloaz : hag oll zeiziou e vuhez a oe euz a seiz vloaz ha seiz-ugent.

29. Ha pa welas penaoz e tostae deiz e varo, e halvas e vab Jozef, hag e lavaras dezañ : Me em-eus kavet gras dirazout, laka da zorn dindan va morzed ; ha gra din trugarez ha gwirionez ; ha na laka ket va bezia en Ejipt.

30. Hogen gra ma'z in da gousked gand va zadou ; ha doug ahanon er-mêz euz ar vro-mañ, ha va laka e bez va gourdadou. Ha Jozef a lavaras dezañ : Me a ray ar pez a hourhemenez din.

31. Ha Jakob a lavaras : Tou eñ eta din. Jozef, o veza touet, Izrael a azeulas Doue, oh en em drei oh penn e wele.

XLVIII. Pennad

Jakob a ro e vennoz da vibien Jozef

1. Goude kement-se, e oe lavaret da Jozef penaoz e oa klañv e dad : neuze, o kemeroud gantañ e zaou vab Manase hag Efraim, ez eas d'e weloud.

2. Lavaret e oe eta d'an hini koz : Setu da vab Jozef a zeu d'az kavoud. Hag eñ oh en em frealzi, en em lakaas en e goazez war e wele.

3. Ha pa oe deuet Jozef, e lavaras dezañ : Doue ollhalloudeg a zo en em ziskouezet din e Luza, pehini a zo e bro Kanaan, hag en-deus va benniget.
4. Lavaret en-deus ivez din : Me az kresko hag az paoto, hag a lakay ahanout e penn kalz a boblou : ha me a roy dit an douar-mañ ha d'az kouenn en da houde, evid ma vezo dit da viken.
5. Rag-se eta da zaou vab, pere a zo bet ganet dit e douar an Ejipt a-barz ma teujen d'az kavoud, a vezo bugale din : Efraim ha Manase a vezo lakaet evel pa vent bugale din, e giz Ruben ha Simeon.
6. Hogen ar re all ez-pezo goude ar re-mañ, a vezo dit hag i a vezo galvet euz a ano o breudeur en o glad.
7. Rag pa zeuen euz a Vezopotamia, e varvas Rachel en hent e douar Kanaan, en nevez-amzer : edon o vond da Efrata, ha me a vezias anezi war hent Efrata, a zo anvet ivez Betleem.
8. Neuze Jakob o weloud mibien Jozef, a lavaras dezañ : Pere eo ar re-mañ ?
9. Ha Jozef a lavaras : Va mibien int, pere en-deus roet Doue din el leh-mañ. Degas i din, eme Jakob, evid ma vennigin anezo.
10. Rag daoulagad Izrael a oa teñvallaet gand e gozni vraz, ha ne helle ket gweloud sklêr. Lakaad a reas eta o zostaad outañ, ha goude beza o briatet ha poket dezo,
11. E lavaras d'e vab : N'on ket bet miret d'az kweloud : Doue zoken en-deus diskouezet din da ouenn.
12. Jozef o veza o zennet euz a zivreh e dad, a azeulas oh en em strinka d'an douar.
13. Hag eñ a lakaas Efraim oh e zorn dehou, da lavaroud eo oh dorn kleiz Izrael ; ha Manase oh e zorn kleiz, da lavaroud eo oh dorn dehou e dad ; hag o zostaad o-daou ouz Jakob.
14. Ha Jakob a astennas e zorn dehou, e lakaas war benn Efraim, pehini a oa ar yaouanka, hag e zorn kleiz war penn Manase, pehini a oa an hena, o lakaad e zaou zorn e kroaz.
15. Hag eñ a vennigas mibien Jozef, o lavaroud : An Doue dirag pehini o-deus kerzet va zadou Abraham hag Izaak, an Doue pehini a vag ahanon adaleg va yaouankiz bete-vremañ ;
16. An êl pehini en-deus va miret a beb droug, ra vennigo ar vugale-mañ : ra halvo warnezo va ano, hag anoiou va zadou Abraham hag Izaak ; ha ra greskint meurbed war an douar.
17. Hogen Jozef o weloud penaoz e dad en-doa lakaet e zorn dehou war penn Efraim, a oe glaharet : hag o kregi e dorn e dad e klaskas e zavel diwar penn Efraim evid e lakaad war penn Manase.
18. Hag eñ a lavaras d'e dad : N'eo ket mad evel-se, va zad ; rag hemañ eo an hena. Laka da zorn dehou war e benn.
19. Jakob o tinaha e ober, a lavaras : Me her goar, va mab, me her goar ; hemañ a vezo ivez e penn ar poblou hag a baoto meurbed ; hogen e vreur yaouanka a vezo brasoh egetañ ; hag e ouenn a gresko er broadou.
20. Ha Jakob a vennigas anezo neuze, o lavaroud : Ennout e vezo benniget Izrael, hag e vezo lavaret : Ra ray Doue dit evel da Efraim, hag evel da Vanase. Hag eñ a lakaas Efraim a-raog Manase.
21. Hag eñ a lavaras neuze da Jozef, e vab : Setu on dare da vervel ; ha Doue a vezo ganeoh, hag ho tegaso a-nevez da vro ho tadou.
22. Me a ro dit, dreist da vreudeur, eul lodenn pehini em-eus tennet euz a zaouarn an Amorreed gand va hleze ha gand va gwareg.

XLIX. Pennad

Diouganou Jakob d'e vibien

1. Hogen Jakob a halvas e vibien, hag a lavaras dezo : En em zastumit, evid ma tiouganin deoh ar pezh a dle c'hoarvezoud ganeoh en deizioù diweza.
2. En em zastumit, ha klevit, mibien Jakob, selaouit Izrael ho tad.
3. Ruben va mab hena, te a oe va nerz, ha pennabeg d'am glahar. Ar henta 'oas da gaoud lod em madou, ar brasa er gourhemenn.
4. Diveret out evel dour. Na greski ket ; o veza ma out pignet war gwele da dad, ha ma eh-eus saotret e wele.
5. Simeon ha Levi, breudeur en droug, binviou a fallagriez hag a grizder.
6. Doue ra viro na zeufe va ene da gaoud perz en o huzulioù, ha na ve va gloar en o hevredigez, rag en o hounnar o-deus lazet tud, ha dre o youl o-deus diskaret o hêr.
7. Ra vezo milliger o hounnar, rag pennaduz 'oa : hag o buanegez, rag kriz 'oa. Me o ranno e Jakob, hag o skigno e Izrael.
8. Judaz, da vreudeur az meulo : da zorn a lakay da enebourien dindan ar yeo : mibien da dad a azeulo ahanout.
9. Eul leon yaouank eo Judaz : evid kregi en da breiz out savet, va mab : o tiskuiza out gourvezet evel eul leon hag evel eul leonez. Piou a zihuno anezañ ?
10. Ne vezo ket tennet ar walenn-roue euz a Judaz, nag ar roue euz e ouenn, ken na zeuy an hini a dle beza degaset ; hag hennez a vezo ged ar broadou.
11. Staga a ray e azen yaouank oh ar winienn, hag e azenez, o ! va mab, ouz ar hoad-gwini. Gwalhi a ray e zae er gwin, hag e vantell e gwad ar rezin.
12. Kaerroh eo e zaoulagad eged ar gwin, ha gwennoh e zent eged al lêz.
13. Zabulon a chomo war aod ar mor, hag a yelo gand e listri a borz e porz beteg Sidon.
14. Isakar a vezo evel eun azen kreñv, pehini a hourvezo e-kreiz harzou e lodenn.
15. Gwelet en-deus penaoz e oa mad an ehan, ha penaoz e oa c'hwek an douar : hag eñ en-deus izellaet e skoaz evid dougen e veh, hag en-deus pleget da baea ar gwirioù.
16. Dan a varno e bobl, kerkoulz hag ar breuriezou all euz a Izrael.
17. Ra zeuy Dan evel eun naer en hent, hag evel eun naer-wiber er wenodenn, pehini a grog e seulioù ar marh, evid ma kouezo war chouk e gil an hini a zo pignet warnezañ.
18. Me a hedo da zilvidigez, Aotrou.
19. Gad a vrezekay en e raog, gourizet gand e armou, hag eñ a zistroy ivez gourizet.
20. Aser a vezo c'hwek e vara, hag eñ a roy dudi d'ar roueed.
21. Neftali a vezo evel eur haro laosket ; ha komzou kaer a roy.
22. Jozef a zo eur mab hag a gresko, hag a zo kaer da weloud ; lakaet en-deus ar merhed da zeredeg war ar voger.
23. Hogen an darederien o-deus e heskinet, ha strivet, hag e erezet.
24. E wareg a zo en em harpet war an hini kreñv, hag ereou e zivreh hag e zaouarn a zo bet distaget gand daouarn kreñ Doue Jakob. Ahano eo deuet da vesaer ha da vên Izrael.
25. Doue da dad a vezo da gennerz dit : hag an Ollhalloudeg a vennigo ahanout gand bennoziou an neñv a zo a-zioh, gand bennoziou al lonk a zo a-zindan, gand bennoziou ar bronnou hag ar hovou-lêz.

26. Bennoziou da dad a zo kreñvoh eged bennoziou e hourdadou ; padoud a raint ken na zeuy c'hoant an torgennou 'zo a-viskoaz da viken, war horre ha war penn Jozef, ha r'en em skignit hini a zo evel eun Nazaread e-touez e vreudeur¹².

27. Benjamin a vezo eur bleiz lonteg : dioh ar mintin e tebro e breiz, ha dioh ar pardaez e ranno an diwiskou¹³.

28. Setu ar pennou euz a zaouzeg breuriez Izrael : ha setu ar pez a lavaras o zad dezo : hag eñ a vennigas pep hini anezo gand bennoziou evito o-unan.

29. Hag eñ a hourhemennas dezo, o lavaroud : Mond a ran da gavoud va fobl : beziit ahanon gand va zadou er heo a zaou doull a zo e park Efron, an Hetead.

30. Dirag Mambre, e bro Kanaan, a brenas Abraham, gand ar park, digand Efron an Hetead, evid ober e vez ennañ.

31. Eno eo bet beziet Abraham, gand Sara e wreg : eno eo eo bet beziet Izaak gand Rebekka e wreg : eno ivez eo beziet Lia.

32. Goude beza roet ar gourhemennou hag ar helennou-ze d'e vibien, e kroazas Jakob e dreid war e wele, hag e varvas ; hag e oe lakaet¹⁴ gand e bobl.

L. Pennad

Jakob a zo beziet. Mervel a ra Jozef

1 Pa welaz Jozef e oa maro e dad, en em daolas warnezañ, hag e pokas dezañ en eur ouela.

2. Hag eñ a hourhemennas d'e vezeien balzami korv e dad.

3. Ar re-mañ a reas ar pez a oa bet gourhemennet dezo ; ar pez a badas daou-ugent devez ; rag kement-se a oa ar hiz e-touez balzamerien ar horvou maro : hag an Ejiptianed a ouelas da Jakob e-pad deg deiz ha tri-ugent.

4. Pa oa tremenet deziou ar hañv, e lavaras Jozef da dud Faraon : Ma em-eus kavet trugarez dirazoh, livirit kement-mañ da Faraon,

5. Penaoz en-deus va zad greet ar bedenn-mañ din, o lavaroud : Setu on dare da vervel, va bezia a ri em bez em-eus toullet evidon e bro Kanaan. Me a yelo eta da vezia va zad, hag e tistroin.

6. Ha Faraon a lavaras dezañ : Kee da vezia da dad er hiz ma en-deus da bedet da ober.

7. Pa'z eas Jozef di ez eas gantañ an oll re-genta euz a di Faraon, hag ar gentaganet oll euz a vro an Ejipt.

8. Oll di Jozef gand e vreudeur a yeas ivez ; ha ne chomas e douar Jesen nemed ar vugaligou, an deñved hag ar zaout.

9. Gantañ ez eas ivez kirri ha marheien : hag eur vandenn vraz a dud a oa.

10. Dond a rejont da leur Atad, pehini a zo en tu all d'ar Jourdan : hag eno e lidjont ar hañv gand kalz a zaelou hag a harmou e-pad seiz devez.

11. Pa welas ar Gannaed kement-se, e leverjont : Eur hañv braz a zo e-touez an Ejiptianed. Ha rag-se eh añvjont al leh-se, Kañv an Ejipt.

12. Mibien Jakob a reas eta evel m'en-doa gourhemennet dezo.

13. Hag o veza e zouget e bro Kanaan, e vezjont anezañ er heo a zaou doull en-doa prenet Abraham gand ar park a zelle ouz Mambre, digand Efron an Hetead, evid ober eur bez.

¹² ha r'en em skignit hini a zo evel eun Nazaread e-touez e vreudeur : ? (en eur Bibl e galleg e lenner : "War horre penn priñs e vreudeur".

¹³ diwiskou : an traou bet diwisket euz ar re all (?)

¹⁴ lakaet : dastumet, hervez ar skrid e galleg.

14. Goude m'en-doe Jozef beziet e dad, e tistroas d'an Ejipt gand e vreudeur, hag ar re a oa d'e heul.

15. Pa oe maro Jakob, breudeur Jozef o-doe aon, hag e leverjont etrezo : Jozef en-devezo koun marteze euz an droug en-deus gouzañvet, hag e tistaolo deom an droug on-eus greet dezañ.

16. Kas a rejont eta da lavaroud dezañ : Da dad en-deus gourhemennet deom a-barz ma varvas,

17. ma teujem da lavaroud dit kement-mañ : Me az ped da ankounac'haad torfed da vreudeur, hag ar pehed hag an drougiez o-deus greet en da eneb. Ni ivez a bed ahanout da zisteurel ar fallagriez-se da zervijerien Doue da dad. Jozef a ouelas pa glevas kement-se.

18. Hag e vreudeur o veza deuet d'e gavoud, a azeulas anezañ o stoui beteg an douar, o lavaroud : Ni a zo da zervijerien.

19. Ha Jozef a lavaras dezo : N'ho-pezet ket a aon : ha ni a hell enebi ouz youl Doue ?

20. C'hwi a venne deoh ober droug din ; Hogen Doue en-deus e droet e mad evid va uhellaad, evel ma welit bremañ, hag evid savetei meur a bobl.

21. N'ho-pezet ket 'ta a aon : me ho mago, c'hwi hag ho pugale. Hag eñ a frealzas anezo, o komz outo gand madelez ha gand kaloniezh.

22. Ha Jozef a chomas en Ejipt gand oll di e dad : hag eñ a vevas deg vloaz ha kant. Gweloud a reas bugale Efraim beteg an trede rumm. Bugale Machir, mab Manase, a oe savet ivez war daoulin Jozef.

23. Goude-ze Jozef a lavaras d'e vreudeur : Pa vezin maro, Doue a zeuio d'ho kweloud, hag ho lakay da vond euz ar vro-mañ d'an hini en-deus touet da rei da Abraham, da Izaak ha da Jakob.

24. Goude m'en-doe lavaret dezo en eur doui : Doue a zeuio d'ho kweloud : Kasit emezañ , va eskern ganeoh euz ar vro-mañ.

25. Ha Jozef a varvas d'an oad a zeg vloaz ha kant krenn. Hag e gorv, goude beza leuniet gand louzou c'hwez-vad, a oe lakaet en eun arched en Ejipt.

An Egzod

1. Pennad

Ar baotred saveteet gand an amiegezed

1. Setu anoiou mibien Izrael, pere a zeuas en Ejipt gand Jakob : pep hini anezo a zeuas gand e dud.
2. Ruben, Simeon, Levi, Judaz,
3. Isakar, Zabulon, ha Benjamin,
4. Dan, ha Neftali, Gad hag Aser,
5. Ar re oll a oa deuet euz a Jakob, a oa deg den ha tri-ugent. Hogen Jozef a oa en Ejipt.
6. Pa oa maro Jozef, hag e vreudeur, hag an oll ouenn-mañ,
7. Bugale Izrael a greskas, hag a baotas er hiz ma ra al louzou : kreñv-braz e teujont, hag e kargjont a dud douar Jesen.
8. Neuze e savas eur roue nevez en Ejipt, pehini ne anaveze ket Jozef.
9. Hag eñ a lavaras d'e bobl : Setu pobl bugale Izrael a zo deuet braz he niver, hag a zo kreñvoh egedom.
10. Deuit, gwaskom warnezo gand furnez, gand aon na zeujent da greski muioh c'hoaz : ha mar deu eur brezel da goueza warnom, n'en em unanfent gand on enebourien, na gannfent ahanom, ha na'z ajent er-mêz euz ar vro.
11. Lakaad a reas eta warnezo mistri labouriou, evid o harga a vehiou. Ha sevel a rejont da Faraon kêriou da zastum ed enno, da houzoud eo Fitom ha Ramezez.
12. Ha seul-vui e waskent warnezo, seul-vui e paotent, hag e kreskent e niver.
13. An Ejiptianed a gasee bugale Izrael ; hag i a hlahare anezo oh o goapaad.
14. Hag i a lakaas o buhez da veza c'hwero oh o derhel da ober labouriou kaled pri ha brikennou, ha peb labour douar a vehie anezo.
15. Hogen roue an Ejipt a lavaras da amiegezed an Hebreadezed, a bere unan a oa anvet Sefora, hag eben Fua,
16. o hourhemenni dezo : Pa wilioudot Hebreadezed, ha pa zeuy ar bugel, mar deo eur paotr, lazit eñ ; mar deo eur verh, mirit hi.
17. Hogen an amiegezed o-doe doujañs Doue, ha ne rejont ket dioh gourhemenn roue an Ejipt ; hag e virjont ar baotred.
18. Ar roue o veza galvet ar re-mañ, a lavaras dezo : Petra eo bet fellet deoh da ober o viroud ar baotred ?
19. Hag ar re-mañ a lavaras dezañ : An Hebreadezed n'int ket evel an Ejiptianezed ; gouzoud a reont penaoz e wiliouder, hag a-barz ma oam deuet, int gwiliouder.
20. Doue eta a reas vad d'an amiegezed-se, hag ar bobl a greskas, hag a greñvaas meurbed.
21. Hag o veza m'o-doa an amiegezed doujet Doue, Doue a greskas o madou hag o gouenn.
22. Faraon eta a hourhemennas d'e oll bobl, o lavaroud : Taolit er ster kement paotr a vezo ganet e-touez an Hebreed, ha na virit nemed ar merhed.

II. Pennad

Moizez a zo tennet euz an doureier. Dimezi a ra.

1. Goude-ze eun den euz a di Levi a zimezas gand eur wreg euz e ouenn.

2. Houmañ a engehentas hag a hanas eur mab : ha pa welas-hi penaoz e oa kaer, e kuzas anezañ e-pad tri miz.
3. Ha pa ne helle mui e guza, e kemeras eur gavell broenn, hag e lifras anezañ gand ter ha gand peg, hag e lakaas e-barz ar bugel bihan, hag e tilezas anezañ e-touez ar raoz war ribl ar ster ;
4. Hag e reas da hoar ar bugel chom a bell, evid gweloud petra a hoarvezfe.
5. Hogen setu e teuas merh Faraon evid en em walhi er ster ; hag he flahed a gerze war ribl ar ster. Pa welas-hi ar havell e-touez ar raoz, e kasas unan euz he flahed, evid e zegas dezi.
6. Hag o veza e zigoret, e kavas ennañ eur bugel bihan hag a wihe. Truez he-doe outañ, hag e lavaras : Euz a vugale an Hebreed eo hemañ.
7. Neuze c'hoar ar bugel a lavaras dezi : Ha te a fell dit, emezi, ez ajen da glask dit eur wreg hebreadez a hello maga ar bugel bihan-ze ?
8. Hag hi a lavaras : Kee. Ar plah a yeas eta, hag a halvas he mamm.
9. Ha merh Faraon a lavaras dezi : Kemer ar bugel-mañ ha mag-eñ din ; ha me a roy da hobr dit. Ar wreg a gemeras ar bugel, hag a vagas anezañ ; ha pa oe deuet da grennbaotr, her roas da verh Faraon.
10. Hag houmañ e gemeras da vab, hag eh anvas Moizez, o veza, emezi, ma em-eus e dennet euz an dour.
11. En deziou-ze, pa oe deuet da veza braz, Moizez a yeas er-mêz etrezeg e vreudeur : hag eñ a welas o glahar, ha penaoz eun Ejiptian a skoe gand eun Hebreed, unan euz e vreudeur.
12. Goude m'en-doe sellet tu-mañ ha tu-hont, ha pa ne welas den en e gichenn, e lazas an Ejiptian, hag e kuzas anezañ en trêz.
13. Hag o veza eet er-mêz eun deiz all, e welas daou Hebreed pere en em rendaele, hag e lavaras d'an hini a gunuhe egile : Perag e skoez-te gand da nesa ?
14. Hag hemañ a lavaras : Piou en-deus da lakaet da benn ha da varner warnomni ? Ha te a fell dit va laza, evel ma eh-eus lazet deh eun Ejiptian ? Ha Moizez en-doe aon, hag a lavaras : Penaoz eo bet gouezet kement-se ?
15. Faraon a glevas kement-se, hag a glaske an doare da laza Moizez. Hogen hemañ a dehas a-zirag Faraon, hag a yeas da chom e bro Madian, hag a azezas e-tal eur puñs.
16. Hogen beleg Madian en-doa seiz merh, pere a zeuas da buñsa dour : hag o veza leuniet ar haniou, e felle dezo doura deñved o zad.
17. Mesaerien a zeuas, hag o hasas kuit. Neuze e savas Moizez, hag o tivenn ar merhed yaouank, e touras o deñved.
18. Pa oe distroet da di Ragel o zad, e lavaras hemañ dezo : Perag oh-hu deuet kentoh eged a-gent ?
19. Hag i a lavaras : Eun Ejiptian en-deus on tennet euz a zaouarn ar vesaerien : hag ohpenn en-deus tennet dour deom, hag en-deus roet da eva d'on deñved.
20. Hag eñ a lavaras d'e verhed : Peleh ema ? Perag hoh-hu lezet an den-ze da vond ? Galvit eñ, ma roim da zebri dezañ.
21. Moizez eta a douas penaoz e chomje gantañ. Hag eñ a gemeras da wreg e verh Sefora.
22. Houmañ a hanas dezañ eur mab, a anvas Jersam, o lavaroud : Diavêziad on bet en eur vro a-ziavêz. Eur mab all a hanas, hag a anvas Eliezer, o lavaroud : Doue, va zad ha va skoazell, en-deus va zennet euz a zaouarn Faraon.
23. Pell amzer goude e varvas roue an Ejipt : ha mibien Izrael, o keina dindan o labour, en em lakaas da harmi hag ar garmou a reent en abeg d'o labour a zavas beteg Doue.

24. Ha Doue a glevas o heinvanou ; hag e teuas koun dezañ euz ar gevredigez en-doa greet gand Abraham, Izaak ha Jakob.

25. Hag an Aotrou a zellas ouz mibien Izrael, hag eh anavezaz anezo.

III. Pennad

Doue a gas Moizez evid dieubi an Izraeled

1. Hogen Moizez a vese deñved Jetro, e dad-kaer, beteg Madian : hag o veza kaset e dropell e-kreiz an distro, e teuas etrezeg menez Doue, anvet Horeb.

2. Hag an Aotrou en em ziskouezas dezañ en eur flamm dan a zave euz a-greiz eur vodenn : hag eñ a wele ar vodenn o leski, hep peurzevi.

3. Ha Moizez a lavaraz : Mond a ran da weloud ar weledigez vraz-se, ha perag ar vodenn-ze na beurzevez ket.

4. Hogen an Aotrou oh e weloud o tond da zelloud, a halvas anezañ eus a greiz ar vodenn, hag a lavaraz : Moizez, Moizez. Hag eñ a lavaraz : Setu-me amañ.

5. Ha Doue a lavaraz : Na dosta ket amañ : tenn da voutou euz da dreid ; rag al leh e pehini emaut a zo eun douar santel.

6. Hag eñ a lavaraz c'hoaz : Me eo Doue da dad, Doue Abraham, Doue Izaak, ha Doue Jakob. Moizez a guzas e zremm : rag ne grede ket selloud oh Doue.

7. Hag an Aotrou a lavaraz dezañ : Gwelet em-eus glahar va fobl a zo en Ejipt, ha klevet em-eus he garm en abeg da grizder ar re a zo e penn al labouriou :

8. Hag o houzoud peger braz eo he glahar, on diskennet evid he zenna euz a zaouarn an Ejiptianed, hag he zenna euz an douar-mañ evid he lakaad en eun douar mad hag ehon, en eun douar e pehini e red evel steriou al lêz hag ar mel, e broiou ar Gananeed, hag an Hebreteed, hag an Amorreed, hag ar Ferezeed, hag an Heveed, hag ar Jezubeed.

9. Garm mibien Izrael a zo deuet eta beteg ennon ; ha gwelet em-eus ar hlahar gand pehini int gwasket gand an Ejiptianed.

10. Hogen deus, ha me az kaso etrezeg Faraon, evid ma tegasi va fobl, mibien Izrael, euz an Ejipt.

11. Ha Moizez a lavar da Zoue : Piou on-me evid mond etrezeg Faraon, hag evid degas bugale Izrael euz an Ejipt ?

12. Ha Doue a lavaraz dezañ : Me a vezo ganez ; ha setu an arouez ez-pezo penaoz em-eus da gaset. Pa'z-po tennet va fobl euz an Ejipt, e ri eur zakrifis da Zoue war ar menez-mañ.

13. Ha Moizez a lavaraz da Zoue : Setu ez in etrezeg bugale Izrael, hag e livirin dezo : Doue ho tadou en-deus va degaset etrezeg ennoh. Ma leveront din : Pe ano eo eñ ? Petra a livirin-me ?

14. Ha Doue a lavaraz da Voizez : Me eo an hini a zo. Hag eñ a lavaraz c'hoaz : Kement-mañ a liviri da vugale Izrael : An hini a zo, en-deus va haset etrezeg ennoh.

15. Ha Doue a lavaraz c'hoaz da Izrael : An dra-mañ a leverot da vugale Izrael : An Aotrou, Doue ho tadou, Doue Abraham, Doue Izaak, ha Doue Jakob en-deus va haset etrezeg ennoh. Hennez eo va ano a-viskoaz, drezañ e vezim anavezaz a ouenn da ouenn.

16. Kee, ha dastum ar re goz euz a Izrael, ha lavar dezo : An aotrou, Doue ho tadou, Doue Abraham, Doue Izaak, ha Doue Jakob, a zo en em ziskouezet din, o lavaroud : Deuet on d'ho kweloud, hag em-eus gwelet kement a zo c'hoarvezaz ganeoh en Ejipt.

17. Ha me en-deus falvezet din ho tenna euz a hlahar an Ejipt, evid ho lakaad e broiou ar Gananeed, hag an Heteed, hag an Amorreed, hag ar Ferezeed, hg an Heveed, hag ar Jebuzeed, en eun douar e pehini e red evel steriou al lêz hag ar mel.

18. Hag i a zelaouo da vouez ; hag ez i, te ha re goz Izrael, etrezeg ar roue, hag e liviri dezañ : An Aotrou, Doue an Hebreed, en-deus or galvet. Ho lez da vond tri devez kerz en distro, evid ma raim eur zakrifis d'an Aotrou on Doue.

19. Hogen me a oar penaoz roue an Ejipt n'ho lezo ket da vond, ma n'eo ket rediet gand eun dorn kreñv.

20. Me a astenno eta va dorn, hag e skoin gand an Ejipt meur a vurzud a rin en o hreiz : ha goude-ze ho lezo da vond.

21. Lakaad a rin ar bobl-mañ da gaoud trugarez e-keñver an Ejiptianed : ha pa'z eot kuit, n'ez eot ket ho taouarn goullo.

22. Hogen peb gwreg a houlenno digand heh amezegez, ha digand heh ostizez, listri arhant, ha listri aour, ha dillad : ha c'hwi o lakay war ho mibien ha war ho merhed, hag e tibourhot an Ejiptianed.

IV. Pennad

Moizez a ya d'an Ejipt

1. Moizez a lavaras d'an Aotrou : Ne gredint ket din¹⁵, ha ne zelaouint ket va mouez ; hogen i a lavaro : N'eo ket en em ziskouezet an Aotrou dit.

2. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Petra eh-eus-te en da zorn ? Hag eñ a lavaras : Eur wialenn.

3. Hag an Aotrou a lavaras : Taol-hi d'an douar. Hag eñ he zaolas d'an douar ; hag hi a oe troet en eun naer, en heveleb doare ma tehas Moizez.

4. Hag an Aotrou a lavaras c'hoaz dezañ : Astenn da zorn, ha krog en he lost. Hag eñ a astennas e zorn hag a grogas enni, hag an naer a oe troet en eur wialenn.

5. Evid ma kredint, emezañ, penaoz an Aotrou, Doue o zadou, Doue Abraham, Doue Izaak, ha Doue Jakob, a zo en em ziskouezet dit.

6. An aotrou a lavaras c'hoaz dezañ : Laka da zorn en da askre. Ha pa en-doe e lakaet en e askre, e tennas anezañ leun a lorgnez gwenn evel an erh.

7. Laka adarre, emezañ, da zorn en da askre. Hag eñ e lakaas, hag e dennas adarre ; hag e zorn a oa heñvel ouz e gig all.

8. Ma ne gredont ket dit¹⁶, eme an Aotrou, ha ma ne zelaouont ket mouez an arouez kenta, e kredint da vouez an eil arouez.

9. Ma ne gredont ket c'hoaz d'an diou arouez-se, ha ma ne zelaouont ket da vouez, kemer dour euz ar ster, ha taol eñ war ar seh, ha kement ez-pezo tennet euz ar ster a vezo troet e gwad.

10. Ha Moizez a lavaras d'an Aotrou : O ! va Aotrou, n'on ket bet biskoaz eun den helavar, te her goar ; hag abaoe ma eh-eus komzet ouz da zervicher, va zeod a zo muioh c'hoaz stagellet.

11. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Piou en-deus greet genou an den ? Pe piou en-deus krouet ar mud hag ar bouzar, an hini a wel hag an hini dall ? Ha n'eo ket me eo ?

12. Kee eta, ha me a vezo en da henou ; ha me a zesko dit petra ez-po da lavaroud.

13. Ha Moizez a lavaras : Kas, Aotrou, me az ped, an hini a dleez da gas.

¹⁵ din : iskiz. "ahanon"

¹⁶ dit : ahanout.

14. An Aotrou o vond droug ennañ a-eneb Moizez, a lavaras dezañ : Me a oar penaoz Aaron, da vreur, al Levit, a zo eun den helavar : mond a ray war da arbenn, ha pa az kwelo, en em laouennay en e galon.
15. Komz outañ, ha laka va geriou en da henou : ha me a vezo en da henou, hag e tiskouezin deoh petra a dleit ober.
16. Eñ a gomzo evidout ouz ar bobl, hag a vezo da henou ; ha te a reno anezañ e kement a zell ouz Doue.
17. Kemer ivez en da zorn ar wialenn-ze, gand pehini e ri burzudou.
18. Moizez a yeas kuit, hag a zistroas etrezeg Jetro hag e dad-kaer, hag a lavaras dezañ : Mond a ran, hag e tistroin etrezeg va breudeur en Ejipt, da weloud hag i a zo c'hoaz beo. Ha Jetro a lavaras dezañ : Kee e peoh.
19. Hogen an Aotrou a lavaras da Voizez e Median : Kee, ha distro d'an Ejipt ; rag ar re oll a glaske da laza a zo maro.
20. Moizez a gemeras eta e wreg, hag e vibien, hag o lakaas war eun azen, hag a zistroas d'an Ejipt, o tougen en e zorn gwialenn Doue.
21. Hag an Aotrou a lavaras dezañ pa zistroe d'an Ejipt : Laka evez da ober dirag Faraon an oll vurzudou em-eus lakaet en da zorn : me a galedo e galon, ha ne lezo ket¹⁷ ar bobl da vond kuit.
22. Ha te a lavaro da Faraon : Setu petra a lavar an Aotrou : Va mab kenta ganet eo Izrael.
23. E lavaret em-eus dit : Lez va mab da vond, evid ma ray gwazoniez din ; ha n'eo ket fellet dit¹⁸ e lezel da vond : setu ez an da laza da vab-hena.
24. Hogen, pa edo Moizez en hent, en em ziskouezas an Aotrou dezañ en ostaleri, hag e felle dezañ e laza.
25. Sefora a gemeras raktal eur mên lemm, hag a drohas pod-mezenn he mab ; hag o lakaad he dorn war dreid Moizez, e lavaras : Eur pried a wad out din.
26. Hag an Aotrou a lezas Moizez, goude ma he-doe lavaret-hi : Eur pried a wad out, en abeg d'an emwad.
27. Hogen an Aotrou a lavaras da Aaron : Kee war arbenn da Voizez en distro. Hag eñ a yeas war e arbenn war menez Doue, hag a bokas dezañ.
28. Ha Moizez a zanevellas da Aaron kement en-doa lavaret an Aotrou dezañ oh e gas, hag ar burzudou en-doa gourhemenn dezañ da ober.
29. Hag e teujont o-daou, hag e tastumjont oll re goz e-touez bugale Izrael.
30. Hag Aaron a zanevellas kement en-doa an Aotrou lavaret da Voizez : hag e reas burzudou dirag ar bobl.
31. Hag ar bobl a gredas. Ha pa glevjont penaoz e oa deuet an Aotrou da weloud bugale Izrael, ha penaoz en-dao sellet ouz o glahar, e stoujont hag eh azeuljont.

V. Pennad

Faraon a ra goap euz a hourhemennou Doue

1. Goude-ze Moizez hag Aaron a yeas da gavoud Faraon, hag a lavaras dezañ : Setu petra a lavar an Aotrou, Doue Izrael : Lez da vond va fobl evid ma ray eur sakrifis din en distro.
2. Ha Faraon a lavaras : Piou eo an Aotrou, evid ma selaoufen e vouez, ha ma lezjen da vond Izrael ? Ne anavezan ket an Aotrou, ha ne lezin ket Izrael da vond.

¹⁷ ha ne lezo ket : hag eñ (Faraon) ne lezo...

¹⁸ ha n'eo ket fellet dit : ha ma n'eo ket fellet dit...

3. Hag i a lavaras : Doue an Hebreed en-deus or galvet, evid ma'z aim tri devez kerzed en distro, ha ma raim eur sakrifis d'an Aotrou on Doue ; gand aon na hoarvezje ganeom bosenn pe kleze.
4. Roue an Ejipt a lavaras dezo : Moizez hag Aaron, perag e tistroit-hu ar bobl diou he labour ? It d'ho karg.
5. Ha Faraon a lavaras c'hoaz : Braz eo pobl an douar-ze ; ha c'hwi a wel penaoz eo kresket meurbed. Pegement e kreskfe c'hoaz ma ve roet dezi ehan en he labouriou ?
6. Rei a reas eta gourhemenn en deiz-se d'ar re a oa e penn al labouriou, ha da renerien ar bobl, o lavaroud :
7. Na roit mui a golo, evel a-gent, d'ar bobl-se evid ober o brikennou ; hogen eagnt¹⁹ o-unan da zastum kolo.
8. Ha c'hwi o lakay da ober kement a vrikennou hag e reent a-raog, heb digreski hini. Tud int a zo vak warnezo ; ha rag-se e harmont, o lavaroud : Deom da ober eur sakrifis d'on Doue.
9. Ra vezint karget a labour, ha r'her graint oll evid na livirint mui gevier.
10. Neuze, ar re a oa e penn al labouriou, ha renerien ar bobl, a lavaras dezo : Evel-henn e lavar Faraon : Ne roin mui a golo deoh.
11. It, ha dastumit kolo el leh ma hellot kavoud ; ha koulskoude ne vezo digresket netra euz ho labour.
12. Ar bobl eta en em skignas dre oll vro an Ejipt evid dastum kolo.
13. Hag ar re a oa e penn al labouriou a haste anezo o lavaroud : Grit bemdez an heveleb labour evel ma reeh pa roed kolo deoh.
14. Hag ar re a oa e penn labouriou bugale Izrael, a oe skourjezet gand renerien Faraon, o lavaroud : Perag n'hoh-eus-hu ket roet deh nag hirio kement a vrikennou evel a-gent ?
15. Neuze ar re a oa e penn bugale Izrael a zeuas da gavoud Faraon, hag en eur harmi, a lavaras : Perag e rez-te evel-se e-keñver da zervijerien ?
16. Ne roer ket a golo deom, hag e houlenner diganeom kemend-all a vrikennou. Setu-ni, da zervijerien, a zo skourjezet, ha da bobl a zo gwallaozet a-eneb ar gwir.
17. Hag eñ a lavaras dezo : Tud oh a zo vak warnoh, ha rag-se eo e livirit : Deom da ober eur sakrifis d'on Aotrou.
18. It eta, ha labourit : ne vezo ket roet a golo deoh, hag e root brikennou evel a-gent.
19. Ar re a oa e penn bugale Izrael en em gavas eta e poan, o veza ma oa bet lavaret dezo : Ne vezo digresket hini euz ar brikennou a dleit da rei bemdez.
20. Hag o veza en em gavet gand Moizez hag Aaron, pere a oa chomet war-harz beteg ma teujont euz a-geñver Faraon,
21. E leverjont dezo : Ra welo an Aotrou ha ra varno, o veza ma hoh-eus hol lakaet argaruz dirag Faraon ha dirag e zervijerien, ha ma hoh-eus roet dezañ eur hleze evdid hol laza.
22. Neuze Moizez a zistroas ouz an Aotrou, hag a lavaras dezañ : Aotrou, perag eh-eus-te glaharet ar bobl-se ? Perag eh-eus-te va degaset ?
23. Rag abaoe ma on eet da gavoud Faraon, evid komz outañ en da ano, en-deus glaharet da bobl, ha n'eh-eus ket he zennet a boan.

VI. Pennad

¹⁹ eagnt : ra'z aint.

Doue a ro da anaoud e ano. Nested Ruben, Simeon ha Levi

1. Neuze an Aotrou a lavaras da Voizez : Bremañ e weli petra a rin da Faraon : rag gand eun dorn kreñv e kaso kuit an Izraelited, ha gand eun dorn nerzuz o lakay er-mêz euz e vro.
2. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud : Me eo an Aotrou.
3. Pehini a zo en em ziskouezet da Abraham, da Izaak, ha da Jakob dindan ano an Doue ollhalloudeg : hogen n'em-eus ket roet da anaoud dezo va ano a Adonai²⁰.
4. Greet em-eus ivez kevredigez ganto, ha touet ma rojen dezo douar Kanaan, douar hoh ergerz, e pehini int bet evel diavêzidi.
5. Me em-eus klevet keinvan bugale Izrael, pere a zo gwasket gand an Ejiptianed ; hag eo deuet koun din euz va hevredigez.
6. Rag-se lavar da vugale Izrael : Me eo an Aotrou, pehini en-deus ho tennet euz a vah an Ejiptianed, hag ho tenno euz ar sklaverez, hag ho taspreno gand eur vreh kreñv, ha gand barniou braz.
7. Me ho kemero da bobl din, hag e vezin ho Toue : ha c'hwi a ouezo penaoz eo me an Aotrou ho Toue, pehini ho tenno euz a vah an Ejiptianed ;
8. Hag ho lakay da vond en douar em-eus touet rei da Abraham, da Izaak, ha da Jakob, hag a roin deoh da veza perhenn dezañ, me pehini a zo an Aotrou.
9. Moizez eta a zanevellas kement-mañ da vugale Izrael ; hogen ne zelaoujont ket anezañ, dre an abeg da anken o spered, ha d'o labour kaled.`
10. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
11. Kee da gavoud Faraon, roue an Ejipt, ha komz outañ, evid ma lezo da vond euz e vro bugale Izrael.
12. Ha Moizez a lavaras d'an Aotrou : Setu bugale Izrael ha ne zelaouont ket ahanon ; penaoz e selaoufe ahanon Faraon, pa on dreist-oll dienouad²¹ em muzellou.
13. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez hag Aaron, hag a hourhemennas dezo mond da gavoud bugale Izrael ha Faraon, roue an Ejipt, evid tenna euz an Ejipt bugale Izrael.
14. Setu pennou an tiez, hervez ar gerentiez. Mibien Ruben, kenta ganet Izrael : Hneok ha Fallu, Hesron ha Charmi.
15. Setu kerentiez Ruben. Mibien Simeon : Jamuel ha Jamin, hag Alsod, ha Jachin ; ha Soar ; ha Saul, mab eur Gannaneadez. Setu nested Simeon.
16. Setu ivez mibien Levi hervez e gerentiez : Geson, ha Kaat, ha Merari. Hogen bloaveziou buhez Levi a oe euz a zeiteg vloaz ha c'hweh-ugent.
17. Mibien Gerson : Lohni ha Semei, hervez o herentiez :
18. Mibien Kaat : Amram, hag Isaar, hag Hebron, hag Oziel. Hogen bloaveziou buhez Kaat a oe euz a drizeg vloaz ha tri-ugent.
19. Mibien Merari : Moholi ha Musi. Setu nested Levi hervez o herentiez.
20. Hogen Amram a gemeras da wreg Joc'haded, e genitervez, merh breur e dad, pehini a hanas dezañ Aaron ha Moizez . Ha bloaveziou buhez Amram a oe euz a zeiteg vloaz ha c'hweh-ugent.
21. Ha mibien Isaar : Kore, ha Nefeg, ha Zebri.
22. Ha mibien Oziel : Misael, hag Elisafan, ha Setri.
23. Hogen Aarom a gemeras da wreg Elizabet, merh Aminadab, c'hoar Nahason, pehini a hanas dezañ Nadab, hag Abin, hag Eleazar, hag Itamar.

²⁰ Adonai : = peurbadel.

²¹ dienouad : ? N'on ket gouest da lakaad va muzellou da gomz.

24. Ha mibien Kore : Aser, hag Elkana, hag Abiasaf. Setu nested ar Goreed.
25. Hogen Eleazar, mab Aaron, a gemeras da wreg unan euz a verhed Futiel, pehini a hanas dezañ Fineez. Setu pennou mibien Levi, hervez o herentiez.
26. Aaron ha Moizez eo ar re da bere e hourmennas an Aotrou kas bugale Izrael er-mêz euz a vro an Ejipt hervez o rummou.
27. Ar re-ze eo a gomzas ouz Faraon, roue an Ejipt, evid tenna bugale Izrael euz an Ejipt : ar re-ze eo Moizez hag Aaron,
28. En deiz e pehini e komzas an Aotrou ouz Moizez, e douar an Ejipt ;
29. Pa gomzas an Aotrou ouz Moizez, o lavaroud : Me eo an Aotrou : lavar da Faraon, rour an Ejipt, kement a lavaran dit.
30. Ha Moizez a lavaras d'an Aotrou : Setu on dienouad em muzellou, penaoz e selaou ahanon Faraon !

VII. Pennad

Gwialenn Aaron troet en eun naer

1. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Setu em-eus da lakaet er hiz da Zoue da Faraon ; hag Aaron da vreur a vezo da brofed.
2. Te a lavaro dezañ kement a hourhemennin dit ; hag Aaron a gomzo ouz Faraon evid ma lezo da vond bugale Izrael euz e vro.
3. Hogen me a galedo e galon, hag a raio aroueziou ha burzudou stank e bro an Ejipt.
4. Ha Faraon ne zelaouo ket ahanoh, ha me a astenno va dorn war an Ejipt, hag e kasin va arme ha va fobl, bugale Izrael, euz a vro an Ejipt, dre varnedigeziou braz.
5. Hag an Ejiptianed a ouezo penaoz eo me an Aotrou, pa astennin va dorn war an Ejipt, hag e kasin bugale Izrael euz o zouez.
6. Moizez hag Aaron a reas eta ar pezh en-doa gourhemennet an Aotrou dezo : evel-se e rejont.
7. Hogen Moizez en-doa pevar-ugent vloaz, hag Aaron tri ha pevar-ugent, pa gomzjont ouz Faraon.
8. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez ha da Aaron :
9. Pa lavaro Faraon deoh : Diskouezit aroueziou, e liviri da Aaron : Kemer da wialenn, ha taol hi dirag Faraon ; hag e vezo troet en eun naer.
10. Moizez hag Aaron a yeas eta da gavoud Faraon, hag a reas ar pezh en-doa gourhemennet an Aotrou dezo : hag Aaron a daolas ar wialenn dirag Faraon, ha dirag e dud, hag hi a oe troet en eun naer.
11. Hogen Faraon a halvas ar re fur hag ar strobinnerien : hag i a reas ivez an heveleb tra gand breou an Ejipt ha gand o breou.
12. Rag pep hini anezo a daolas e wialenn, hag i a oe troet e naered : hogen gwialenn Aaron a lonkas o gwialennou.
13. Ha kalon Faraon a galedas, ha ne zelaouas ket anezo, evel m'en-doa lavaret an Aotrou.
14. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Kaledet eo kalon Faraon, ne fell ket dezañ lezel va fobl da vond kuit.
15. Kee d'e gavoud diouh ar mintin, pa zeuy er-mêz evid mond etrezeg an dour ; hag e chomi en da zav war aod ar ster evid mond war e arbenn, hag e talhi en da zorn ar wialenn a zo bet troet en eun naer.

16. Ha lavar dezañ : An Aotrou, Doue an Hebreed, en-deus va degaset etrezeg ennout, evid lavaroud dit : Lez da vond va fobl evid am ray eur sakrifis din en distro ; ha bete vremañ n'eo ket fellet dit va zelaoui.

17. Setu eta petra a lavar an Aotrou : Diah kement-mañ e ouezi penaoz eo me an Aotrou : Mond a ran da skei war dour ar ster gand ar wialenn a zo em dorn, hag e vezo troet e gwad.

18. Ar pesked a zo er ster a varvo, hag an doureier a yelo da fall, hag an Ejiptianed a evo dour ar ster a vezo klañv.

19. An Aotrou a lavaras c'hoaz da Voizez : Lavar da Aaron ; kemer da wialenn, hag astenn da zorn war doureier en Ejipt, war ar steriou, war ar goueriu, war ar gwerniou, ha war al lagennou, evid ma vezint troet e gwad ; ha ne vezo nemed gwad en Ejipt, ken el listri prenn, ken el listri pri.

20. Moizez hag Aaron a reas ar pezh en-doa gourhemennet an Aotrou dezo : hag Aaron o sevel e wialenn, a skoas war dour ar ster dirag Faraon hag e dud ; hag an dour a oe troet e gwad.

21. Ar pesked a oa er ster a varvas ; dour ar ster a zeuas da vreina, hag an Ijiptianed ne hellent ket eva dour ar ster ; ha gwad a oe e oll vro an Ejipt.

22. Strobinnerien an Ejipt a reas an heveleb tra gand o breou : ha kalon Faraon a galedas, ha ne zelaouas ket anezo, evel m'en-doa lavaret an Aotrou.

23. Ha Faraon a yeas kuit, hag a zistroas d'e di, ha ne blegas ket c'hoaz e galon evid ar wech-se.

24. Hogen an Ejiptianed oll a ree toullou war-dro d'ar ster evid eva dour ; rag ne hellent ket eva euz a zour ar ster.

25. Hag e tremenas seiz devez krenn, abaoe m'en-doa an Aotrou skoet gand ar ster.

VIII. Pennad

Eil gouli, raned. Trede gouli, fubu. Pevare gouli, kelien

1. An Aotrou a lavaras c'hoaz da Voizez : Kee da gavoud Faraon, ha lavar dezañ : Setu petra a lavar an Aotrou : Lez da vond va fobl, evid ma ray eur sakrifis din.

2. Ma ne fell ket dit he lezel da vond, setu e skoin da oll harzou gand raned.

3. Hag ar ster a vervo gand ar raned, pere a bigno hag a zeuy en da di, hag er gambr e pehini e kouskez, ha war da wele, hag e tiez da zervijerien, hag e re da oll bobl, hag en da fornou, ha war an tammou boued a chomo en da zilerh.

4. Evel-se ez ay ar raned etrezeg ennout, hag etrezeg da bobl, hag etrezeg da oll zervijerien.

5. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Lavar da Aaron : Astenn da zorn war ar steriou, ha war ar goueriu, ha degas raned war douar an Ejipt.

6. Hag Aaron a astennas e zorn war doureier an Ejipt, hag e savas ar raned, hag e holjont douar an Ejipt.

7. Ar strobinnerien a reas an heveleb tra gand o breou, hag e tegasjont raned war douar an Ejipt.

8. Neuze Faraon a halvast Moizez hag Aaron, hag a lavaras dezo : Pedit an Aotrou ma tenno ar raned diwarnon ha diwar va fobl, ha me a lezo ar bobl da vond, ha da ober eur sakrifis d'an Aotrou.

9. Ha Moizez a lavaras da Faraon : Lavar din peur e tlean pedi evidout, hag evid da zervijerien, hag evid da bobl, ma'z ay ar raned diouzit, ha diouz da di, ha diouz da zervijerien, ha diouz da bobl, ha ma chomint hepken er ster.
10. Ha Faraon a lavaras : Warhoaz. Ha Moizez a lavaras : Hervez da her e rin, evid ma ouezi penaoz n'eus hini heñvel ouz an Aotrou, on Doue.
11. Hag ar raned a'z ay diouzit, ha diouz da di, ha diouz da zervijerien, ha diouz da bobl, hag er ster hepken e chomint.
12. Moizez hag Aaron a yeas kuit euz a zirag Faraon, ha Moizez a harmas etrezeg an Aotrou evid ma sevenje ar ger en-doa roet-eñ da Faraon da gas dioutañ ar raned, en deiz m'en-doa merket.
13. Hag an Aotrou a reas dioh lavar Moizez : hag ar raned a varvas en tiez, er hêriou, hag er parkou.
14. Dastumet e oent a verniou braz, hag an douar a flêrias ganto.
15. Hogen, pa welas Faraon penaoz e oa roet ehan dezañ, e pounnerraas e galon, ha ne zelaouas ket anezo evel m'en-doa lavaret an Aotrou.
16. Neuze an Aotrou a lavaras da Voizez : Lavar da Aaron : Astenn da wialenn, ha sko war boultr an douar, ha ra zeuy laou dre oll vro an Ejipt.
17. Hag i a reas evel-se. Aaron a astennas e zorn hag e wialenn, hag a skoas war poultr an douar ; hag an dud, hag al loened, a oe goloet gand al laou : oll boultr an douar a oe troet e laou dre oll vro an Ejipt.
18. Ar strobinnerien a fellas dezo ober an heveleb tra gand gand o breou, ha degas laou ; hogen ne helljont ket. Hag al laou en em daolas war an dud ha war al loened.
19. Hag ar strobinnerien a lavaras da Faraon : Biz Doue a zo amañ. Ha kalon Faraon a galedas, ha ne zelaouas ket anezo, evel m'en-doa lavaret an Aotrou.
20. An Aotrou a lavaras c'hoaz da Voizez : Sao dioh ar mintin, ha kee da gavoud Faraon ; rag eñ a zeuy er-mêz evid mond etrezeg an dour ; hag e liviri dezañ : Setu petra a lavar an Aotrou : Lez da vond va fobl, evid ma ray eur sakrifis din.
21. Ma ne lezez ket anezi da vond, setu ez an da gas warnout, ha war da zervijerien, ha war da bobl, hag en da diez, kelien a beb gouenn : ha tiez an Ejiptianed, hag an douar oll e pehini e vezint, a vezo leun a gelien a beb gouenn.
22. Hag en deiz-se e rin ma vezo bro Jesen, e pehini ema va fobl, eun douar burzuduz, ha ne vezo ket a gelien ennañ ; evid ma ouezi penaoz eo me an Aotrou euz an douar oll.
23. Ha me a lakay eur rann etre va fobl ha da bobl ; warhoaz e c'hoarvezo an arouez-se.
24. Hag an Aotrou a reas evel-se. Hag eul lod braz a gelien a zeuas e tiez Faraon hag e zervijerien, hag e oll vro an Ejipt : hag an douar a oe saotret gand ar helien-ze.
25. Neuze Faraon a halvas Moizez hag Aaron, hag a lavaras dezo : It ha grit eur sakrifis d'ho Toue er vro-mañ.
26. Ha Moizez a lavaras : Ne hell ket beza greet kement-se ; rag ni a dle laza, e azeulidigez d'an Aotrou on Doue, traou argaruz d'an Ejiptianed. Ma lazom dirag an Ejiptianed ar pez a azeulont, e labezint ahanom.
27. Mond a raim tri devez kerz en distro, hag e raim eno sakrifis d'an Aotrou on Doue, evel ma en-deus e hourhemennet deom.
28. Ha Faraon a lavaras dezañ : Me ho lezo da vond evid ma reot eur sakrifis d'an Aotrou ho Toue en distro, hogen n'az it ket pelloh : pedit evidon.

29. Ha Moizez a lavaras : Pa vezin eet diouzit, e pedin an Aotrou ; ha warhoaz an oll gelien a vezo eet diouz Faraon, ha diouz e zervijerien, ha diouz e bobl. Hogen ne douelli mui ahanon, o viroud ouz ar bobl da ober eur sakrifis d'an Aotrou.

30. Ha Moizez o veza eet kuit diouz Faraon, a bedas an Aotrou.

31. Hag an Aotrou a reas dioh lavar Moizez ; hag eñ a gasas kuit ar helien dioh Faraon, ha dioh e zervijerien, ha dioh e bobl ; ha ne chomas mui anezo.

32. Hogen kaledi a reas kalon Faraon, ha ne lezas ket ar bobl da vond evid ar veaj-se.

IX. Pennad

Pempved gouli, bosenn al loened.

C'hwehved gouli : gouliou-lineg war an dud.

Seizved gouli : kazarh.

1. Neuze an Aotrou a lavaras da Voizez : Kee da gavoud Faraon, ha lavar dezañ : Setu petra a lavar an Aotrou, Doue an Hebreed : Lez da vond va fobl, evid ma ray eur sakrifis din.

2. Ma ne fell ket dit hen ober, ha mar talvez anezo,

3. setu e savin va dorn war da barkou : hag eur vosenn gwall hriziaz a zeuy war ar hezeg, war an ezen, war ar hañvaled, war an ejenned, ha war an deñved.

4. Hag an Aotrou a ray eur rann burzuduz etre madou Izrael ha madou an Ejiptianed, en heveleb doare na vezo skoet netra euz ar pezh a vezo e-kerz bugale Izrael.

5. Hag an Aotrou en-deus merket an amzer, o lavaroud : Warhoaz e seveno an Aotrou ar ger-ze war an douar.

6. An Aotrou a reas eta antronoz ar pezh en-doa lavaret : hag oll loened an Ejiptianed a varvas ; hogen ne varvas hini euz a loened bugale Izrael.

7. Faraon a gasas da weloud ha ne oa maro hini euz ar re a oa e-kerz Izrael. Hogen kaledi a reas kalon Faraon, ha ne lezas ket ar bobl da vond kuit.

8. Hga an Aotrou a lavaras da Voizez ha da Aaron : Kemerit leiz ho taouarn a ludu euz an oaled, ha ra daolo Moizez anezo en êr dirag Faraon.

9. Ha r'en em skigno al ludu-ze war oll zouar an Ejipt : hag e teuy gouliou lineg ha goriou war an dud ha war al loened, e oll vro an Ejipt.

10. Hag i a gemeras ludu euz an oaled, hag a yeas da gavoud Faraon : Ha Moizez o zaolas en êr : ha gouliou lineg, ha goriou, a zavas war an dud ha war al loened.

11. Hag ar strobinnerien ne hellent ket en em zerhel en o zav dirag Moizez, en abeg d'ar gouliou a oa deuet dezo, kerkoulz ha d'an dud oll euz an Ejipt.

12. Hag an Aotrou a galedas kalon Faraon, hag hemañ ne zelaouas ket Moizez hag Aaron, evel m'en-doa lavaret an Aotrou da Voizez.

13. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Sao diouz ar mintin, ha kee da gavoud Faraon, ha lavar dezañ : Setu petra a lavar an Aotrou, Doue an Hebreed : Lez da vond va fobl, evid ma ray eur sakrifis din.

14. Rag er wech-mañ e kasin va oll houliou war da galon, ha war da zervijerien, ha war da bobl ; evid ma ouezi penaoz n'eus hini heñvel ouzin en douar oll.

15. Rag bremañ ez astennin va dorn, hag e kasin ar vosenn warnout ha war da bobl, ha te a zizerio diwar an douar.

16. Dre ze eo em-eus da lakaet evid diskouez ennout va nerz, ha ma vezo brudet va ano en douar oll.
17. Ha c'hoaz e talhez va fobl, ha ne fell ket dit he lezel da vond ?
18. Setu ez an warhoaz ha d'an eur-mañ, da hlaeia eur hazardh braz, heñvel ouz pehini n'eus ket bet gwelet en Ejipt, abaoe an deiz ma eo bet savet bete vremañ.
19. Kas eta bremañ ha dastum da loened, ha kement a zo dit er parkou : rag kement den, kement loen, ha kement tra en em gavo er-mêz, ha na vezo ket tennet euz ar parkou, a vezo skoet gand ar hazardh, hag a varvo.
20. Ar re euz a zervijerien Faraon pere a zouje ger an Aotrou a lakaas o mevelou hag o loened d'en em denna en tiez.
21. Hogen ar re pere a zisprizas ger an Aotrou, a lezas o mevelou hag o loened er parkou.
22. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Astenn da zorn war-zu an neñv, evid ma kouezo kazarh e oll vro an Ejipt, war an dud, ha war al loened, ha war an oll louzou euz ar parkou e douar an Ejipt.
23. Ha Moizez a astennas e wialenn war-zu an neñv, hag an Aotrou a zegasas kurun ha kazarh ha tan-red war an douar, hag an Aotrou a lakaas glaoia kazarh war douar an Ejipt.
24. Ar hazardh hag an tan a goueze an eil e-mesk egile : ha ken teo e oe ar hazardh, na oe biskoaz a-raog gwelet kemend all e oll vro an Ejipt, abaoe ma oa deuet da vroad.
25. Ar hazardh e oll vro an Ejipt a skoas war gement en em gavas er parkou, adaleg an dud beteg al loened. Ar hazardh a skoas ivez war oll louzou ar parkou, hag a dorras ar gwez oll.
26. E bro Jezen hepken, e peleh edo bugale Izrael, ne gouezas ket ar hazardh-se.
27. Neuze Faraon a lakaas gervel Moizez hag Aaron, hag a lavaras dezo : Pehed em-eus c'hoaz ar wech-mañ : : Gwirion eo an Aotrou ; ha me ha va fobl a zo tud fallagr.
28. Pedit an Aotrou evid ma ehano kurun Doue, hag ar hazardh ; ha me ho lezo da vond, ha ne chomot mui amañ.
29. Ha Moizez a lavaras dezañ : Pa vezin eet er-mêz euz a gêr, eh astennin va daouarn etrezeg an Aotrou, hag eh ehano ar gurun, ha ne vezo mui a gazarh ; evid ma ouezi penaoz eo an douar d'an Aotrou.
30. Hogen me a oar penaoz ne zoujez ket c'hoaz an Aotrou Doue, na te, na da zervijerien.
31. Al lin hag an heiz a vezo gwastet, o vez ma oa diheodet²² an heiz, ha ma oa al lin savet e had :
32. Hogen ar gwiniz hag ar segal ne oent ket gwastet, o veza ma oant diwezatoh.
33. Ha pa oa eet Moizez diouz Faraon, hag er-mêz euz a gêr, eh astennas e zaouarn etrezeg an Aotrou : hag ar gurun hag ar hazardh a ehanas, ha ne gouezas mui a hlao war an douar.
34. Hogen pa welas Faraon penaoz e oa ehanet ar glao hag ar hazardh, hag ar gurun, e kreskas e behed :
35. Hag e galon, hag hini e zervijerien, a bounnerraas hag a galedas mui-oh-mui ; ha ne lezas ket da vond bugale Izrael, evel m'en-doa gourhemennet an Atrou dre zorn Moizez.

²² diheodet : dizahet.

X. Pennad

Eizved gouli, killeien-raden. Naved gouli, teñvalijenn.

1. Neuze an Aotrou a lavaras da Voizez : Kee da gavoud Faraon ; rag kaledet em-eus e galon, ha kalon e zervijerien, evid ma tiskouezin va aroueziou ennañ ;
2. Hag evid ma tanevelli d'az pugale, ha da vugale da vugale, ped gwech em-eus skoet war an Ejiptianed, ha ped arouez em-eus diskouezet enno ; hag evid ma ouiot penaoz eo me an Aotrou.
3. Moizez hag Aaron a zeuas eta da gavoud Faraon, hag a lavaras dezañ : Setu petra a lavar an Aotrou, Doue an Hebreed : Beteg pegeid ne fello ket dit douja din ? Lez va fobl da vond, evid ma ray eur sakrifis din.
4. Ma enebez c'hoaz, ha ma ne fell ket dit he lezel da vond, e tegasin warhoaz killeien-raden en dra vro.
5. Ar re-mañ a holoy gorre an douar, ha ne vezo gwelet tamm anezañ. Hag i a zebro kement a vezo chomet war-lerh ar hazardh : rag i a grigno an oll wez a zav er parkou.
6. Hag i a leugno da diez, ha tiez da zervijerien, ha tiez an oll Ejiptianed ; en heveleb doare n'o-deus gwelet da dadou, na tadou da dadou kemend-all, abaoe ma'z int deuet war an douar, bete vremañ. Ha Moizez a zistroas kuit diouz Faraon.
7. Hogen servijerien Faraon a lavaras dezañ : Beteg pegeid e houzañvim-ni an trouz-se ? Lez da vond an dud-se evid ma raint eur sakrifis d'an Aotrou, o Doue. Ha ne welez ket te penaoz eo gwastet an Ejipt ?
8. Hag i a halvas adarre Moizez hag Aaron da gavoud Faraon, pehini a lavaras dezo : It, ha grit eur sakrifis d'an Aotrou, ho Toue : hogen piou eo ar re a dle mond ?
9. Ha Moizez a lavaras : Mond a raim gand or bugale, ha gand or re goz, gand or mibien ha gand or merhed, gand on deñved ha gand or zaout : rag gouel liduz an Aotrou, on Doue, eo.
10. Ha Faraon a lavaras dezo : Ra vezo an Aotrou ganeoh, en heveleb doare ma ho lezin da vond, c'hwi hag ho pugale. Piou a hellfe beza e mar ho-po-c'hwi eur gwall gown ?
11. Ne vezo ket greet kement-se ; hogen it, c'hwi hepken, gwazed, ha grit eur sakrifis d'an Aotrou ; rag setu petra hoh-eus goulennet hoh-unan. Ha raktal e oent kaset kuit euz a zirag Faraon.
12. Hogen an Aotrou a lavaras da Voizez : Astenn da zorn war douar an Ejipt, evid degas killeien-raden, pere a bigno war an douar, hag a wasto an oll heot a vezo chomet war-lerh ar hazardh.
13. Ha Moizez a astennas e wialenn war douar an Ejipt : hag an Aotrou a zegasas eun avel leskidig, 'hed an deiz hag 'hed an noz, ha pa zeuas ar mintin an avel leskidig a lakaas da zavel killeien-raden.
14. Ar re-mañ a yeas war oll vro an Ejipt, hag a chomas war harzou an Ejipt en eun niver ker braz na oe gwelet, nag a-raog, na goude, eun heveleb niver.
15. Hag i a holoas an douar oll, hag a wastas pep tra. Lonka a rejont eta geot an douar, ha kement frouezenn a oa chomet war ar gwez a-zilerh ar hazardh : ha ne chomas netra a hlaz na war ar gwez, nag er geot, e oll vro an Ejipt.
16. Rag-se Faraon a halvas raktal Moizez hag Aaron, hag a lavaras dezo : Pehed em-eus a-eneb an Aotrou ho Toue hag en hoh eneb-hu.
17. Hogen distaolit din ar pehed-mañ evid eur wech c'hoaz, ha pedit an Aotrou, ho Toue, ma tenno ar maro-ze diouzin.
18. Ha Moizez o veza eet kuit dioh Faraon, a bedas an Aotrou ;

19. Pehini a lakaas da hweza eun avel kreñv-meurbed euz ar huz-heol, a dennas gantañ ar hilleien-raden, hag o zaolas er mor Ruz. Ha ne chomas hini en oll Ejipt.
20. Hogen an Aotrou a galedas kalon Faraon, hag hemañ ne lezas ket da vond bugale Izrael.
21. An Aotrou a lavaras eta da Voizez : Astenn da zorn war-zu an neñv ; ha ra vezo teñvalijenn war douar an Ejipt, ken teo ha ma vezo gelllet o dornata.
22. Ha Moizez a astennas e zorn war-zu an neñv : hag eun deñvalijenn euzuz a zavas war oll vro an Ejipt e-pad tri devez.
23. Den ne wele e vreur, ha ne grede ket fiñval euz al leh e pehini ma edo : hogen e pe leh bennag ma chome bugale Izrael ez oa sklêrijenn.
24. Ha Faraon a halvas Moizez hag Aaron, hag a lavaras dezo : It ha grit eur sakrifis d'an Aotrou : ra chomo hepken ho teñved hag ho saout, ha ra'z ay ho pugale ganeoh.
25. Ha Moizez a lavaras : Rei a ri ivez deom ostivou ha loened losket evid ma o hennigim d'an Aotrou, on Doue.
26. On oll loened a gerzo ganeom, ha ne chomo ket eun ivin anezo ; ezomm on-eus anezo evid azeulidigez an Aotrou, on Doue ; pa eo gwir penaoz ne ouzom ket petra a dleim da laza, ken na vezim eet di.
27. Hogen an Aotrou a galedas kalon ar Faraon, ha ne fellas ket da hemañ o lezel da vond kuit.
28. Ha Faraon a lavaras da Voizez : Pella diouzin, ha laka evez na weli mui va dremm : rag e pe zeiz bennag ma en em ziskouezi dirazon, e varvi.
29. Ha Moizez a lavaras : Greet e vezo evel ma leverez ; ne welin mui da zremm.

XI Pennad

Diweza gouli, maro ar re genta.

1. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Nemed eur gouli hepken na daolin mui war Faraon ha war an Ejipt ; ha goude-ze ho lezo da vond, hag hoh hasto da vond kuit.
2. C'hwi a lavaro eta d'an oll bobl, ma houlenno peb gwaz diouz e vignon, ha peb maouez diouz he amezegez, listri arhant hag aour.
3. Hag an Aotrou a roy trugarez d'e bobl digand an Ejiptianed. Ha Moizez a oa eun den braz-meurbed e bro an Ejipt, dirag servijerien Faraon ha dirag e bobl.
4. Ha Moizez a lavaras : Setu petra a lavar an Aotrou : Da hanternoz ez in hag e kerzin dre an Ejipt :
5. Ha pep kenta-ganet euz a vro an Ejipt a varvo, adaleg kenta-ganet Faraon, pehini a zo azezet war e dron, beteg kenta-ganet ar vatez, pehini a dro ar mên-milin, ha kenta-ganet an oll loened.
6. Hag eur garm braz a vezo e oll vro an Ejipt, ha ker braz ha na oe gwelet kent, ha ne vezo gwelet goude.
7. Rag e-touez bugale Izrael, adaleg an den beteg al loened, ne vezo ket klevet eur hi oh harzal : evid ma ouiot gand peger braz burzud e tilenn an Aotrou an Ejiptianed diouz Izrael.
8. Neuze da oll zervijerien a zo amañ a zeuy etrezeg ennon, hag a azeulo ahanon, o lavaroud : Kee kuit, te hag an oll bobl a zo dindan da veli : ha goude-ze ez aim kuit.

9. Ha Moizez en em dennas a-zirag Faraon, eun droug braz ennañ. Hogen an Aotrou a lavaras da Voizez : Faraon n'ho selaouo ket, evid ma c'hoarvezo kalz a aroueziou e bro an Ejipt.

10. Moizez hag Aaron a reas dirag Faraon an oll vurzudou a zo skrivet. Hag an Aotrou a galedas kalon Faraon, pehini ne lezas ket bugale Izrel da vond kuit euz e vro.

XII. Pennad

Oan Bask. Bara dihoell. Maro ar re genta-ganet euz an Ejipt.

1. An Aotrou a lavaras ivez da Voizez ha da Aaron, e douar an Ejipt :
2. Ar miz-mañ a vezo evidoh ar henta euz ar miziou : ar henta e vo euz a viziou ar bloaz.
3. Komzit ouz oll bagad bugale Izrael, ha livirit dezo : D'an degved deiz euz ar miz-mañ, ra gemero pep hini eun oan evid e dud hag evid e di.
4. Hogen ma n'eus ket a-walh a dud en ti evid debri an oan, e kemero e ti e amezeg, an tosta d'e hini, an niver a dud a vezo red evid debri an oan.
5. An oan a vezo dinamm, par ha bloaziad²³. Bez' e hellot ivez kemeroud eur menn-gaor, gand ma vezo evel-se.
6. Ha c'hwi e viro beteg ar pevarzegved deiz euz ar miz-se ; hag an niver braz euz a vugale Izrael a lazo anezañ war ar pardaez.
7. Hag i a gemero euz e wad, hag a lakay war an daou bost ha war gourinou an doriou euz an tiez e pere e tebrint anezañ.
8. Hag ar hig a zebrint e noz-se, goude beza e rsoet ouz an tan, ha baraou²⁴ dihoell, gand lezegezed²⁵ gouez.
9. Ne zebrot netra a-griz, na poazet en dour, hogen hepken rostet ouz an tan : debri a reot e benn, gand e dreid hag e vouzellou.
10. Ha ne chomo netra anezañ beteg ar mintin. Mar chom eun dra bennag, hel loskot en tan.
11. Hogen evel-henn hen debrot : ho tiougrozell a hourizot, peb a re voutou ho-po en ho treid, hag eur vaz en ho torn. Hag e tebrot buan, rag ar Pask eo, da lavaroud eo, tremenadur an Aotrou.
12. Ha me a dremeno dre vro an Ejipt en noz-se, hag a skoy gand pep kenta-ganet e douar an Ejipt, adaleg an den, beteg al loen ; ha me a zougo va barn war oll zoueou an Ejipt, me pehini eo an Aotrou.
13. Hogen ar gwad a vezo deoh da arouez en tiez e pere e viot : ha pa welin ar gwad, e tremenin e-biou deoh ; hag ar gouli gwastuz ne gouezo ket warnoh, pa skoin war douar an Ejipt.
14. An deiz-mañ a vezo da veneg deoh, ha c'hwi her miro da houel d'an Aotrou a ouenn da ouenn dre eul lid peurbaduz.
15. E-pad seiz devez e tebrot batra dihoell. Adaleg an deiz kenta ne vezo ket a hoell en ho tiez : ha piou bennag a zebro bara-goell adaleg an deiz kenta beteg ar seizved deiz, a gollo e vuhez en Izrael.
16. An deiz kenta a vezo santel ha liduz, hag ar seizved deiz a vezo ivez eur gouel ken enoruz hag egile. Ne reot labour ebed en deiziou-ze, nemed e kement a zell ouz ar boued.

²³ bloaziad : eur bloaz dezañ.

²⁴ baraou : liester "bara".

²⁵ lezegezed : lezegenned (?)

17. Miroud a reot eta gouel ar bara dihoell ; rag en deiz-se eo e tegasin hoh arme er-mêz euz a vro an Ejipt ; hag e virot an deiz-se a ouenn da ouenn dre eul lid peurbaduz.
18. Er miz kenta, d'ar pevarzegved deiz euz ar miz, war ar pardaez, e tebrot bara dihoell, beteg an unan warn-ugent euz an heveleb miz war ar pardaez.
19. E-pad seiz devez ne vezo ket kavet a hoell en ho tiez. Piou bennag a zebro bara-goell, a gollo e vuhez e-kreiz Izrael, ken an dud a-ziavêz , ken tud ar vro.
20. Ne zebrot netra a ve goell ennañ ; en ho tiez oll e tebrot bara dihoell.
21. Hogen Moizez a halvas an oll re goz euz a vugale Izrael, hag a lavaras dezo : It ha kemerit eun oan dre bep tiad, ha lazit ar Pask.
22. Soubit eur vodennig sikadez²⁶ er gwad a zo war harz an nor, ha sparlit ganti ar gourin, hag an daou bost. N'ez eet hini ahanoh er-mêz euz a zor e di a-barz ar mintin.
23. Rag an Aotrou a dremeno hag a skoy gand an Ejiptianed : ha pa welo ar gwad war ar gourin, ha war an daou bost, e tremeno e-biou d'ho ti, ha ne lezo ket ar gwaster da vond en ho tiez, ha da skei ganeoh.
24. Mir ar ger-mañ evel eun dra reiz evidout, hag evid da vugale da viken.
25. Ha pa viot eet en douar a roy deoh an Aotrou, hervez e her, e virot al lidouze.
26. Ha pa lavaro deoh ho pugale : Petra eo al lid-se ?
27. E leverot dezo : Viktim²⁷ tremenadur an Aotrou eo, pa dremenas e-biou da diez bugale Izrael en Ejipt, pa skoas gand an Ejiptianed ha pa zieubas on tiez. Neuze ar blobl a stouas hag a azeulas an Aotrou.
28. Ha bugale Izrael o veza eet kuit, a reas evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez ha da Aaron.
29. Hogen war-dro hanternoz, an Aotrou a skoas gand pep kenta-ganet e bro an Ejipt, adaleg kenta-ganet Faraon, pehini a oa azezet war e dron, beteg kenta-ganet ar sklavez, pehini a oa er vah, ha pep kenta-ganet al loened.
30. Faraon a zavas e-doug an noz, eñ hag e oll zervijerien, hag an oll Ejiptianed : hag eur garm braz a zavas en Ejipt : rag en oa ti ebed e pehini n'en em gave eun den maro.
31. Ha Faraon o veza galvet Moizez hag Aaron en heveleb noz, a lavaras dezo : Savit, hag it kuit euz a-greiz va fobl, c'hwi ha bugale Izrael ; it, ha grit eur sakrifis d'an Aotrou, evel ma livirit.
32. Kasit ganeoh ho teñved hag ho saout, evel ma hoh-eus e houlennet, hag o vond kuit, bennigit ahanon.
33. An Ejiptianed a zifree ivez ar bobl da vond buan er-mêz euz ar vro, o lavaroud : Oll e varvim.
34. Ar bobl a gemeras an toaz kent ma oa go ; ha goude beza e ereet en o dillad, hel lakajont war o diskoaz.
35. Bugale Izrael a reas ivez ar pez en-doa gourhemennet Moizez ; hag i a houlennas digand an Ejiptianed listri arhant hag aour, ha kalz a zillad.
36. Hag an Aotrou a lakaas e bobl da gaoud trugarez dirag an Ejiptianed evid ma raje ar re-mañ dudi dezo : hag i a zibourhas an Ejiptianed.
37. Ha bugale Izrael a yeas kuit euz a Ramezez da Zokot, hag i war-dro kant mil den war droad, heb niveri ar vugale.
38. Hogen bez' e oa en o mesk eul lod braz a bobl, ha kalz a zeñved, a zaout, hag a loened a beb rumm.

²⁶ sikadez : plantenn a vroud an dud.

²⁷ Viktim : ? Galleg ? Hervez eue skrid e galleg : "Sakrafis Pask an hini eo, en enor an Aotrou"

39. Hag i a boazas an toaz o-doa degaset a-nevez 'oa euz an Ejipt : hag e rejont baraou dihoell poazet dindan al ludu ;rag n'o-doa ket gellet o lakaad da hoi, o veza ma o redie an Ejiptianed da vond kuit, ha n'o lezent ket da zalea ; ha n'o-doa ket gellet kennebeud aoza boued ebed evid an hent.

40. Hogen an amzer ma oa chomet bugale Izrael en Ejipt, a oe euz a bevar-hant tregont vloaz ;

41. Goude pere, en heveleb deiz, oll arme an Aotrou a yeas er-mêz euz an Ejipt.

42. An noz-se e pehini an Aotrou en-deus o zennet euz an Ejipt, a dle beza miret d'an Aotrou : miret e tle beza gand oll vugale Izrael, ha gand o gouenn.

43. An Aotrou a lavaras ivez da Voizez ha da Aaron : Setu amañ lid ar Pask. Diavêziad ebed ne zebro anezañ.

44. Pep sklav a vezo bet prenet, a vezo amdrohet, ha goude-ze e tebro hag ar anezañ.

45. An diavêziad hag ar gopraer ne zebrint ket anezañ

46. En eun ti hepken e vezo debret. Ne zougot ket euz e gig er-mêz ; ha ne dorrot askorn ebed dezañ.

47. Oll strollad Izrael a ray anezañ.

48. Mar fell da eun diavêziad en em unani ganeoh, hag ober Pask an Aotrou, ra vezo amdrohet pep gwaz anezo, ha neuze hel lido ervad : hag eñ a vezo evel pa ve ganet en ho pro ; hogen neb na vezo ket amdrohet ne zebro ket anezañ.

49. Heñvel e vezo al lezenn evid tud ar vro hag evid an diavêzidi a zeuy da chom en ho mesk.

50. Oll vugale Izrael a reas evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez ha da Aaron.

51. Hag en heveleb deiz-se e tennas an Aotrou bugale Izrael euz a vro an Ejipt, en o rummadou.

XIII. Pennad

*Doue a hourhemenn kinniga dezañ ar re genta-ganet,
ken euz an dud, ken euz al loened.*

1. Nezue an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

2. Gouestl din pep kenta-ganet a zigor ar hov e-touez bugale Izrael, ken euz an dud, ken euz al loened : rag pep tra a zo din.

3. Ha Moizez a lavaras d'ar bobl : Ho-pezet koun euz an deiz-se e pehini oh deuet er-mêz euz an Ejipt hag euz a di ar sklaverez ; rag an Aotrou en-deus ho tennet ahano gand eun dorn kreñv : rag-se ne zebrot ket bara go.

4. Hirio ez it er-mêz e miz ar frouez nevez.

5. Ha pa en-devezo an Aotrou da lakaet da vond e douar ar Gananeed, hag an Heteed, hag an Amorreed, hag an Heveed, hag ar Jebuceed, en-deus touet d'az tadou ma roje dit douar e pehini e redo lêz ha mel, e virot al lid sakr-se er miz-mañ.

6. E-pad seiz devez e tebrot bara dihoell : hag ar seizved devez e vezo lid an Aotrou.

7. Bara dihoell a zebrot e-pad seiz devez : ha ne vezo gwelet netra a ho en ho tiez, nag en tiez tro-war-dro.

8. Ha te a gomzo ouz da vab en deiz-se, o lavaroud : Setu petra en-deus greet an Aotrou din, pa on deuet er-mêz euz an Ejipt.

9. Hag an dra-mañ a vezo evel eun arouez en ho torn, hag e doare eur menneg dirag ho taoulagad, evid ma vezo bepred lezenn an Aotrou en da henou ;rag an Aotrou en-deus da dennet gand eun dorn kreñv euz an Ejipt.
10. Al lid-se a virot en amzer verket, a vloaz da vloaz.
11. Ha pa en-devezo an Aotrou da lakaet da vond e douar ar Gananeed, er hiz m'en-deus e douet dit, ha d'az tadou, ha ma en-devezo e roet dit ;
12. E ranni evid an Aotrou kement a zigor kov e vamm, ha kement a zo ganet da genta e-touez da loened ; ha kement par ez-pezo a ouestli d'an Aotrou.
13. Evid ar henta-ganet euz a eun azen, e roi eun oan : mar n'her prenez ket er hiz-se, e lazi anezañ. Hogen pep kenta-ganet euz da vibien a breñi gand arhant.
14. Ha ma ra da vab ar goulenn-mañ eun deiz da zond, o lavaroud : Petra eo an dra-mañ ? E liviri dezañ : An Aotrou en-deus on tennet gand eun dorn kreñv euz a zouar an Ejipt, euz a di ar sklaverez.
15. Rag Faraon o veza en em galedet, ha ne felle ket dezañ ol lezel da vond, an Aotrou a lazaz pep kenta-ganet e bro Ejipt, adaleg kenta-ganet eun den, beteg kenta-ganet al loened : rag-se e ouestlan d'an Aotrou kement par a zigor kov e vamm, hag e prenan pep kenta-ganet euz va mibien.
16. An dra-mañ a vezo eta evel eun arouez euz da zorn, hag evel eun dra a-ispill dirag da zaoulagad, evid eñvor : o veza ma en-deus an Aotrou on tennet gand eun dorn kreñv euz an Ejipt.
17. Hogen pa gasaz Faraon ar bobl kuit, n'o hasaz ket Doue dre hent bro ar Filistined, pehini eo an nesa, gand aon na zeujent da gaoud keuz pa weljent ar brezel o sevel en o eneb, ha na zistrojent d'an Ejipt.
18. Hogen o lakaad a reaz da ober an dro dre hent an distro, a zo war harz ar mor Ruz ; ha bugale Izrael a yeaz er-mêz euz an Ejipt hag i armet.
19. Moizez a gasaz ivez gantañ eskern Jozef, hervez m'en-doa hemañ pedet stard gand le bugale Izrael, o lavaroud : Doue a zeuio d'ho kweloud ; kasit ahann va eskern ganeoh.
20. Hag i o veza eet kuit euz a Zokot, a ziazezas o hamp e Etam, war lez an distro.
21. Hogen an Aotrou a gerze en o raog evid diskoueza an hent dezo, e doare eur peul koabr e-pad an deiz, hag e doare eur peul tan e-pad an noz, evid ma o renje e peb amzer.
22. Biskoaz ne ehanas d'en em ziskoueza dirag ar bobl ar peul koabr e-pad an deiz, hag ar peul tan e-pad an noz.

XIV. Pennad

Bugale Izrael a dreuz ar mor Ruz heb glebia o zreid.

1. Hogen an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
2. Lavar da vugale Izrael ma tistroint ha ma tiazezint o hamp dirag Fihahiro, pehini a zo etre Magdala hag ar mor, rag-eneb da Veelsefon : ha c'hwi a lakay ho kamp eno war ar mor.
3. Rag Faraon a lavaro diwar-benn bugale Izrael : Strizet int en douar, ha serret en distro.
4. Ha me a galedo e galon, hag eñ a redo war ho lerh ; ha me a vezo meulet e Faraon, hag en e oll arme, hag an Ejiptianed a ouezo penaoz eo me an Aotrou. Ha bugale Izrael a reaz evel-se.

5. Ha roet e oa da anaoud da roue an Ejiptianed penaoz e oa tehet ar bobl a Izrael. Neuze e troas kalon Faraon hag e zervijerien e-keñver ar bobl, hag e leverjont : Petra eo bet fellet deom da ober pa on-eus lezet Izrael da vond ; evid na vije mui dindan or gwazoniez ?
6. Hag eñ a bignas war e garr, hag a gasas gantañ e oll bobl.
7. Kas a reas ivez c’hweh-kant karr dilennet, hag an oll girri a oa en Ejipt, hag oll bennou an arme.
8. Hag an Aotrou a galedas kalon Faraon, roue an Ejipt, hag hemañ a yeas war-lerh bugale Izrael. Hogen ar re-mañ a oa eet kuit dindan eun dorn uhel.
9. An Ejiptianed eta o vond war o lerh, o havas en o hamp war aod ar mor. Oll varheien hag oll girri Faraon, hag e oll arme, a zeuas beteg Fihahiro, rag-eneb da Veelsefon.
10. Ha pa dostae Faraon, bugale Izrael o sevel o daoulagad, a welas an Ejiptianed war o lerh, hag i a oe spontet-braz, hag a harmas ouz an Aotrou,
11. O lavaroud da Voizez : Ne oa ket marteze a veziou en Ejipt, ha dre ze eo eh-eus on degaset evid mervel en distro. Petra eo bet fellet dit da ober, pa eh-eus on tennet euz an Ejipt ?
12. Ha ne gomzem ket ouzit evel-se en Ejipt, o lavaroud : Pella diouzm, evid ma vezim dindan gwazoniez an Ejiptianed ? Ha gwell e oa deom beza dindan o gwazoniez eged mervel en distro.
13. Ha Moizez a lavaras d’ar bobl : N’ho-pezet ket a aon : savit, ha gwelit ar burzudou a dle ober hirio an Aotrou : rag an Ejiptianed-se, pere a welit bremañ, n’o gwelot mui biken.
14. An Aotrou a stourmo evidoh, ha c’hwi a davo.
15. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Perag e harmez-te etrezeg ennon ? Lavar da vugale Izrael kerzoud.
16. Hogen te, sao da wialenn hag astenn da zorn war ar mor, ha rann eñ, evid ma kerzo bugale Izrael e-kreiz ar mor war ar seh.
17. Ha me a galedo kalon an Ejiptianed evid ma’z aint war ho lerh : ha me a vezo meulet e Faraon, hag en e oll arme, hag en e girri, hag en e varheien.
18. Hag an Ejiptianed a ouezo penaoz eo me an Aotrou, pa vezim bet meulet e Faraon, hag en e girri, hag en e varheien.
19. Neuze an êl Doue, pehini a yee a-raog kamp Izrael, en em lakaas war o lerh ; hag en heveleb amzer ar peul koabr, o tilezel ar penn a-raog, en em lakaas er penn a-dreñv,
20. Etre kamp an Ejiptianed ha kamp Izrael : hag ar goabrenn a oa teñval evid an Ejiptianed, hag a houlaoue e-pad an noz evid Izrael, en heveleb doare na helljont ket tostaad an eil ouz egile a-hed an noz.
21. Ha pa en-doe Moizez astennet e zorn war ar mor, an Aotrou a zamzigoas anezañ o lakaad da hweza eun avel greñv ha leskidig a-hed an noz, pehini a zizehas ar mor : hag an dour a oa rannet.
22. Ha bugale Izrael a yeas dre greiz ar mor a oa dizehet ; rag an dour a oa savet evel eur voger, a-zehou hag a-gleiz dezo.
23. Hag an Ejiptianed pere a gerze war o lerh, a heulias anezo dre greiz ar mor gand oll gezeg Faraon, hag e girri, hag e varheien.
24. Ha pa oa deuet beill ar mintin, an Aotrou o veza sellet ouz kamp an Ejiptianed dre greiz ar peul tan ha koabr, a zismantras o arme.
25. Hag eñ a dorras rodou o hirri, hag i a oe diskaret d’an traoñ. Hag an Ejiptianed a lavaras : Tehom diouz Izrael, rag an Aotrou a stourm evito en on eneb.

26. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Astenn da zorn war ar mor, evid ma tistroy an doureier war an Ejiptianed, war o hirri ha war o marheien.

27. Moizez a astennas e zorn war ar mor : ha da darz an deiz e tistroas ar mor d'e genta leh. Ha pa en em lakaas an Ejiptianed da dehi, an doureier a zeuas a-eneb dezo, hag an Aotrou o strobas e-kreiz ar hoummou.

28. Distrei a reas eta an doureier, hag e holjont ar hirri hag ar varheien euz a oll arme Faraon, a oa deuet er mor war-lerh Izrael, ha ne dehas hini anezo.

29. Hogen bugale Izrael a gerzas a dreid seh dre greiz ar mor, hag an doureier a oa evito evel eur voger a-zehou hag a-gleiz.

30. Evel-se an Aotrou a dennas Izrael en deiz-se euz a zorn an Ejiptianed.

31. Hag i a welas korvou maro an Ejiptianed war aod ar mor, hag ar galloud braz en-doa diskouezet an Aotrou en o eneb : hag ar bobl a zoujas an Aotrou, hag a gredas d'an Aotrou, ha da Voizez, e zervijer.

XV. Pennad

Kanaouenn a drugarez. Doureier c'hwero.

1. Neuze Moizez ha bugale Izrael a ganas ar ganaouenn-mañ d'an Aotrou, o lavaroud : Kanom d'an Aotrou ; rag diskouezet en-deus ez eo braz-meurbed, eñ hag e hloar ; taolet en-deus er mor ar marh hag e varheg.

2. Va nerz ha va meuleudi eo an Aotrou ; ha da zilvidigez eo deuet din : Eñ eo va Doue, ha me her meulo : Doue va zad, ha me hen uhellay meurbed.

3. An Aotrou a zo evel eun den a vrezel, ollhalloudeg eo e ano.

4. Kirri Faraon hag e arme en-deus taolet er mor : ar re vrasa euz e briñsed a zo bet beuzet er mor Ruz.

5. Al lonk en-deus o goloet : diskennet int er goueled evel eur mên.

6. Da zorn dehou, Aotrou, en-deus diskouezet ez out braz ha galloudeg : da zorn dehou, Aotrou, en-deus skoet gand an enebour.

7. O veza ma'z eo braz-meurbed da hloar, eh-eus diskaret da enebourien : da vuanedegez eh-eus degaset, rag hi he-deus o bevezet evel eur goloenn.

8. Gand ar hwezadenn euz da froudenn an doureier a zo en em zastumet : an dour a rede a zo chomet a-zav, hag al lonkou a zo en em zastumet e-kreiz ar mor.

9. An enebour en-deus lavaret : Me a yelo war o lerh, hag a dizo anezo ; me a ranno o diwisk, ha va halon a vezo leun : tenna a rin va hleze, ha va dorn o lazo.

10. Da avel en-deus c'hwezet, hag ar mor en-deus o goloet. Beuzet int bet evel ploum en doureier diboell.

11. Piou a zo heñvel ouzit, Aotrou, e-touez ar re greñv ? Piou a zo heñvel ouzit, skeduz a zantelez, euzuz ha meuluz, hag a ra burzudou ?

12. Astennet eh-eus da zorn, hag an douar en-deus o lonket.

13. Deuet out gand da drugarez da rener d'ar bobl eh-eus dasprenet : ha douget eh-eus gand da nerz beteg da gêr zantel.

14. Ar poblou a zo savet, droug enno : glaharet-braz eo bet ar re a chom e Palestina.

15. Neuze priñsed Edom a zo bet keflusket : ar spont a zo kroget er re greñv euz a Yoab : ar re oll a chom e Kanaan a zo bet dizehet gand aon.

16. R'en em daolo warnezo an aon hag ar spont gand ar galloud euz da vreh : ra chomint digeflusk evel eur garreg beteg ma vezo tremenet da bobl, Aotrou, beteg ma vezo tremenet ar bobl-se eh-eus prenet.

17. Te a gaso hag a stardo anezo war menez da zegouez²⁸, er gêr bosteg eh-eus greet da-unan, Aotrou, en da zantual, Aotrou, o-deus startaet da zaouarn.
18. An Aotrou a reno da viken, hag en tu all d'an amzeriou.
19. Rag Faraon a zo eet er mor war varh, gand e girri hag e varheien ; hag an Aotrou en-deus degaset warnezo ar mor : hogen bugale Izrael o-deus kerzet en e greiz war ar seh.
20. Mari Profedez, c'hoar Aaron, a gemeras eun daboulin en he dorn, hag an oll verhed a yeas war he lerh gand taboulinou, hag en eur zañsal.
21. Ha Mari a gane da genta, o lavaroud : Kanom d'an Aotrou ; rag diskouezet en-deus e veurded gand gloar, taolet en-deus er mor ar marh hag e varheg.
22. Neuze Moizez a dennas Izrael euz ar mor Ruz, hag i a yeas e-barz an distro²⁹ a Zur ; ha goude beza kerzet e-pad tri devez en distro, ne gavent ket a zour.
23. Hag e teujont da Vara, ha ne hellent ket eva euz a zoureier Mara, o veza ma oant c'hwero. Dre ze eo e oe roet d'al leh eun ano deread, oh e hervel Mara, da lavaroud eo c'hwevder.
24. Hag ar bobl a grozas ouz Moizez, o lavaroud : Petra a evim-ni ?
25. Hogen Moizez a harmas ouz an Aotrou, pehini a ziskouezas dezañ koad, pehini, pa oe taolet gantañ en doureier, o lakaas da veza c'hwek. Eno e roas Doue d'ar bobl kelennou ha lezennou, hag eno eh arnodas anezo,
26. o lavaroud : Mar selaouez mouez an Aotrou da Zoue, ha mar grez ar pez a zo reiz dirazañ ; mar sentez ouz e hourhemennou, ha mar mirez e oll gelennou, ne daolin ket warnout an oll gleñvejou em-eus taolet war an Ejipt ; rag me eo an Aotrou a yaha.
27. Goude-ze bugael Izrael a zeuas da Elim, e peleh e oa daouzeg feunteun zour, ha deg palmezenn ha tri-ugent ; hag i a ziazezas o hamp e-tal an doureier.

XVI. Pennad

Doue a gas ar Mann

1. Hag i a yeas kuit euz a Elim, hag oll strollad bugale Izrael a zeuas e distro³⁰ Sin, a zo etre Elim ha Sinai, d'ar pemzegved deiz euz an eil miz, goude ma oant eet er-mêz euz a vro an Ejipt.
2. Hag oll strollad bugale Izrael a grozas ouz Moizez hag Aaron en distro.
3. Ha bugale Izrael a lavaras dezo : a-youl e vem maro dre zorn an Aotrou e bro an Ejipt, pa edom azezet e-tal ar podadou kig, hag e tebrem bara dioh or gwalh. Perag hoh-eus-hu or haset en distro-mañ evid lakaad da vervel gand an naon an oll bobl ?
4. Neuze an Aotrou a lavaras da Voizez : Setu ez an da hlaoia deoh bara euz an neñv ; ra'z ay ar bobl da zastumi ar pez a zo red dezo evid pep devez, evid ma welin hag i a gerz em lezenn, pe ma ne gerzont ket.
5. Hogen d'ar c'hwehved deiz ra zastumint kement a hellint da viroud ; diou wech kemend-all ha ma'z int boazet da zastumi bemdez.
6. Neuze Moizez hag Aaron a lavaras da oll vugale Izrael : Henoz e ouiot penaoz eo an Aotrou en-deus ho tennet euz a vro an Ejipt.
7. Ha warhoaz vintin e welot gloar an Aotrou ; rag klevet en-deus ho kroz en e eneb : hogen petra om-ni, evid ma krozjeh en on eneb ?

²⁸ da zegouez : da herez (hervez eur skrid e galleg).

²⁹ an distro : ar goueleh.

³⁰ distro : goueleh.

8. Moizez a lavaras c'hoaz : An Aotrou a roy deoh henoz kig da zebri, ha warhoaz vintin bara dioh ho kwalh, o veza ma en-deus klevet ho krouz en e eneb. Hogen ni, petra om-ni ? N'eo ket en on eneb ema ho krouz, a-eneb an Aotrou eo.
9. Moizez a lavaras ivez da Aaron : Lavar da oll strollad bugale Izrael : Dinesait³¹ dirag an Aotrou ; rag klevet en-deus ho krouz.
10. Ha pa gomze Aaron ouz oll strollad bugale Izrael, e selljont ouz an distro ; ha setu gloar an Aotrou en em ziskouezas war ar goabrenn.
11. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
12. Klevet em-eus krouz bugale Izrael ; lavar dezo : : Henoz e tebrot kig, ha warhoaz vintin ho-pezo bara dioh ho kwalh : ha c'hwi a ouezo penaoz eo me an Aotrou, ho Toue.
13. Pa oe deuet eta ar pardaez, e savas koailled, hag a holoas ar hamp, ha dioh ar mintin e oe gwelet gliz a oa kouezet war-dro d'ar hamp.
14. Ha pa en-doe goloet gorre an douar, e oe gwelet en distro eun dra vunut, hag eñ heñvel pa ve brevet en eul laouerig, hag a oa heñvel ouz ar reo a gouez war an douar.
15. Pa welas bugale Izrael kement-se, e leverjont an eil d'egile : Man-hu ? Da lavared eo : Petra eo an dra-ze ? Rag ne ouient ket petra e ao. Ha Moizez a lavaras dezo : Henez eo ar bara a ro deoh an Aotrou da zebri.
16. Setu petra a hourhemenn an Aotrou : Dastumet pep hini anezañ kement kement hag a zo red dezañ evid en em vaga : eur gomor³² dre bep penn den ; kement-se a gemerot hervez an niver euz ar re a chom e pep telt³³.
17. Ha mibien Izrael a reas evel-se ; hag e tastumjont lod muioh, lod nebeutoh.
18. Hag i a ventas dioh ment ar gomor : hag an hini en-doa dastumet kalz, n'en-doe ket muioh ; hag an hini en-doa dastumet nebeud, n'en-doe ket nebeutoh : hogen pep hini en-doa dastumet dioh ma helle debri.
19. Ha Moizez a lavaras dezo : Na viro den euz anezañ beteg antronoz vintin.
20. Hogen ne zelaoujont ket anezañ ; ha lod anezo a viras beteg ar mintin, hag ar preñved en em lakaas ennañ, hag e vreinas. Ha Moizez a zavas droug ennañ.
21. Pep hini eta a zastume dioh ar mintin kement ha ma oa red dezañ evid en em vaga : ha pa zeue an heol da domma, e teuze.
22. Hogen er c'hwehved deiz e tastumjont daou gement a voued, da lavaroud eo, daou humor dre bep den : hag oll briñsed ar bobl a zeuas, hag a lavaras kement-se da Voizez.
23. Hag eñ a lavaras dezo : Evel-se en-deus lavaret an Aotrou : warhoaz ema ehan ar sabat a dle beza gouestlet d'an Aotrou : grit hirio ar pez hoh-eus da ober, ha poazit ar pez hoh-eus da boaza : ha mirit evid warhoaz vintin ar pez a vezo a-zilerh.
24. Hag i a reas evel m'en-doa gourhemennet Moizez, hag ar mann ne vreinas ket, ha ne oe kavet a breñved ennañ.
25. Ha Moizez a lavaras : Debrit eñ hirio, rag sabat an Aotrou eo : ne gavfot ket anezañ hirio er parkou.
26. Dastumit anezañ e-pad c'hweh devez : hogen er seizved deiz ema sabat an Aotrou, rag-se ne vezo ket kavet anezañ.
27. Ar seizved deiz o veza deuet, lod euz ar bobl a yeas er-mêz evid dastum mann, ha ne gavjont ket.
28. Neuze an Aotrou a lavaras da Voizez : Beteg pegeid ne fello ket deoh miroud va gourhemennou ha va lezenn ?

³¹ Dinesait : tostait.

³² gomor: omer, e galleg.

³³ telt : ridoch, stign.

29. Gwelit penaoz an Aotrou en-deus roet deoh ar sabat, ha rag-se ar c'hwehved deiz en-deus roet deoh daou-gement a voued : ra chomo eta pep hini en e di, ha na'z ay hini er-mêz euz e leh d'ar seizved deiz.

30. Evel-se ar bobl a viras ar sabat d'ar seizved deiz.

31. Ha ti Izrael a halvas³⁴ ar boued-se : Mann. Heñvel e oa ouz had koriander³⁵ ; gwenn e oa, hag e vlaz evel bleud flour gand mel.

32. Ha Moizez a lavaras c'hoaz : Setu petra a hourhemenn an Aotrou : Laka anezañ 'leiz eur gomor, ha ra vezo miret evid ar gouennou da zond, evid ma anavezint ar bara gand pehini em-eus ho maget en distro, pa oh bet tennet euz a vro an Ejipt.

33. Ha Moizez a lavaras da Aaron : Kemer eul lestr, ha laka ennañ mann, kement ha ma hell derhel eur gomor : ha laka eñ dirag an Aotrou, evid e viroud evid ho kouennou.

34. Evel ma en-deus gourhemennet an Aotrou da Voizez. Hag Aaron hel lakaas en tabernakl³⁶ evid e viroud.

35. Hogen bugale Izrael a zebras mann e-pad daou-ugent vloaz, beteg ma teujont en eur vro ma helled chom enni. Gand ar boued-se e oent maget, beteg ma tizjont harzou bro Kanaan.

36. Hogen ar gomor a zo an degved rann euz an efi³⁷

XVII. Pennad

Dour tennet euz ar roh. An Izraeled treh d'an Amalesited

1. Oll strollad bugale Izrael o veza eta eet kuit euz a zistro Sin, dre an arzaouiou a oe bet gourhemennet dezo gand an Aotrou, a ziazezas o hamp e Rafidim, e peleh ne oa ket a zour da eva d'ar bobl.

2. Ar re-mañ a grozas ouz Moizez, hag a lavaras dezañ : Ro deom dour da eva. Ha Moizez a lavaras dezo : Perag e kroat-hu ? Perag e temptit-hu an Aotrou ?

3. Ar bobl eta en-doe sehed eno gand an dienez a zour, hag a grozas ouz Moizez, o lavaroud : Perag eh-eus-te ol lakaet da zond er-mêz euz an Ejipt, evid ol lakaad da vervel gand ar sehed, ni hag or bugale, hag ol loened ?

4. Hogen Moizez a harmas etrezeg an Aotrou, o lavaroud : Petra a rin-me d'ar bobl-mañ ? C'hoaz eun nebeud, hag e labezo ahanon.

5. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Kerz a-raog ar bobl ha kemer ganez lod euz a re goz Izrael : kemer en da zorn ar wialenn gand pehini eh-eus skoet war ar ster, ha kerz.

6. Setu me a vezo eno dirazout war vên Horeb : war ar mên e skoi, hag e teuy dour anezañ, evid ma evo ar bobl. Moizez a reas evel-se dirag ar re goz euz a Izrael.

7. Hag eñ a halvas al leh-se Temptasion, en abeg da groz bugale Izrael, ha m'o-doa eno temptet an Aotrou, o lavaroud : Hag an Aotrou a zo en or hreiz, pe n'ema ket ?

8. Hogen Amalek a zeuas, hag en em gannas ouz Izrael e Rafidim.

9. Ha Moizez a lavaras da Jozue : Dibab tud, ha kee d'en em ganna ouz Amalek. Warhoaz en em zalhin war lein ar grehenn, ha gwialenn Doue em dorn.

³⁴ a halvas : a anvas. (Implijoud a ra Gonideg ar verb "gervel" e-leh ar verb "eñvel").

³⁵ koriander : doare plant.

³⁶ tabernakl : eun deltenn gand ar Judevien en amzer-goz.

³⁷ efi : "epha" e galleg.

10. Jozue a reas evel m'en-doa lavaret Moizez dezañ, hag a stourmas ouz Amalek ; ha Moizez, Aaron hag Hur a bignas war lein ar grehenn.

11. Ha pa zave Moizez e zaouarn, e oa treh Izrael : hogen ma izellae eun nebeud anezo, e hounenze Amalek.

12. Hogen daouarn Moizez a oa skuiz ha pounner : hag i a gemeras eur mên a lakajont dindannañ, hag eñ a azezas warnezañ : Hag Aaron hag Hur a skore e zaouarn en daou du. Evel-se e zaouarn ne skuizjont ket beteg kuz-heol.

13. Jozue eta a lakaas Amalek da dehi, hag a lazaz ivez e bobl gand ar hleze.

14. Neuze an Aotrou a lavaraz da Voizez : Skriv an dra-mañ evid meneg en eul levr, ha ro eñ da glevoud da Jozue : rag me a lamo meneg Amalek a-zindan an neñv.

15. Ha Moizez a zavas eun aoter, hag a halvas anezi : An Aotrou a zo va uhelled, o lavaroud :

16. Dorn an Aotrou, ha brezel an Aotrou a zavo euz e dron a-eneb Amalek a ouenn da ouenn.

XVIII. Pennad

Jetrou a gas da Voizez e wreg hag e vugale.

1. Pa glevas Jetrou, beleg Madian, tad-kaer Moizez, kement en-doa greet Doue da Voizez, ha da Izrael e bobl, ha penaoz en-doa he zennet euz an Ejipt,

2. e kemeras Sefora, gwreg Moizez, en-doa kaset kuit,

3. hag e zaou vab, a bere unan a oa anvet Gersam, e dad o veza lavaret : Diavêziad on bet en eur vro a-ziavêz.

4. Hag egile o veza anvet Eliezer ; rag Doue va zad, eme Moizez, a zo bet va divenner, hag en-deus va dieubet euz a gleze Faraon.

5. Jetrou eta, tad-kaer Moizez, hag e vugale, hag e wreg, a zeuas da gaoud Moizez en distro, e peleh en-doa diazezet e gamp dirag menez Doue.

6. Hag eñ a gasas da lavaroud da Voizez : me eo Jetrou, da dad-kaer, a zo deuet d'az kavoud, gand da wreg ha da zaou vab.

7. Moizez, o veza eet er-mêz war arbenn d'e dad-kaer, a stouas dirazañ, hag a bokas dezañ : hag i a hetas peb mad an eil d'egile. Ha pa oa eet Jetrou dindan an telt,

8. Moizez a lavaraz d'e dad-kaer kement en-doa greet an Aotrou da Faraon ha d'an Ejiptianed en abeg da Izrael ; kement poan a oa c'hoarvezet ganto en hent, ha penaoz en-doa an Aotrou o diboaniet.

9. Jetrou a laouennaas en abeg d'an oll vadou en-doa greet an Aotrou da Izrael, hag o veza m'en-doa e dennet euz a zaouarn an Ejiptianed.

10. Hag e lavaraz : Benniget ra vezo an Aotrou, pehini en-deus ho tennet euz a zaouarn an Ejiptianed, hag euz a zaouarn Faraon, pehini en-deus tennet e bobl euz a zaouarn an Ejiptianed.

11. Bremañ eh anavezaz penaoz eo braz an Aotrou dreist an oll zoueed, pa int bet savet gand balhder a-eneb e bobl.

12. Jetrou, tad-kaer Moizez, a ginnigas eta loened losket hag ostivou da Zoue ; hag Aaron gand an oll henaoured euz a Izrael a zeuas hag a zebras bara gantañ dirag Doue.

13. Antronoz Moizez a azezas evid barn ar bobl, pehini en em zalhe dirazañ adaleg ar mintin beteg ar pardaez.

14. Pa welas e dad-kaer kement a ree evid ar bobl-se, e lavaraz : Perag e rez-te evel-se e-keñver ar bobl ? Perag out-te azezet da-unan, ha ma hortoz an oll bobl adaleg ar mintin beteg ar pardaez ?

15. Ha Moizez a lavaras dezañ : Ar bobl a zeu d'am havoud evid kemeroud kuzul digand Doue.
16. Ha pa hoarvez ganto eun dael bennag, e teuont d'am havoud evid ma varnin etrezo, ha ma tiskouezin dezo kelennou ha lezennou Doue.
17. Ha Jetro a lavaras dezañ : N'eo ket mad ar pezh a rez.
18. En em vevezi a rez gand eul labour diboell, te hag ar bobl a zo ganez : eun dra eo hag a zo dreist da nerz, haz ne helli ket ober penn dezañ da-unan.
19. Hogen selaou va geriou ha va aliou, ha Doue a vezo ganez : Bez d'ar bobl e kement a zell oh Doue, evid dougen dezañ goulennou ar bobl,
20. Ha diskouez dezañ al lidou hag an doare gand pere e tle azeuli Doue, an hent dre behini e tle kerzoud, hag ar pezh a dle da ober.
21. Hogen dibab e-touez an oll bobl tud halloudeg hag a zoujañs Doue, tud wirion, hag a gasay ar pizoni, ha laka anezo da bennou da vil den, da gant den, da hanter-kant den, ha da zeg den,
22. pere a varno ar bobl e peb amzer. Hogen kement tra vraz a zegasint dit, ha ne varnint hepken nemed an traou bihan. Hag evel-se e vezo skañvoh dit ar beh pa vezo rannet etre ar re all.
23. Mar grez kement-se, e seveni gourhemenn Doue, hag e helli kenderhel e gelennou ; hag an oll bobl-se a zistroy e peoh d'he leh.
24. Moizez o veza klevet kement-se, a reas ar pezh en-doa lavaret e dad-kaer dezañ.
25. Hag o veza dibabet e-touez an oll bobl Izrael tud halloudeg, o lakaas da bennou d'ar bobl, evid mera mil den, pe kant den, pe hanter-kant den, pe deg den.
26. Ar re-mañ a varne ar bobl e peb amzer : hogen da Voizez e tougent kement a oa tenn, ha ne varnent nemed an traou êz.
27. Goude-ze Moizez a lezas e dad-kaer da vond kuit ; hag hemañ a zistroas d'e vro.

XIX. Pennad.

Doue a ro e lezenn e-kreiz al luhed hag ar hurunou.

1. Eun trede miz goude ma oa deuet bugale Izrael euz a vro an Ejipt, en deiz-se e teujont da zistro Sinai.
2. Rag o veza eet kuit euz a Rafidim, hag o veza deuet beteg distro Sinai, e tiazezjont o hamp en heveleb leh, hag Izrael a stignas e deltoù e-keñver ar menez.
3. Hogen Moizez a bignas etrezeg Doue ; rag an Aotrou a halvas anezañ diwar ar menez, hag a lavaras dezañ : Setu petra a liviri da di Jakob, hag a roi da anaoud da vugale Izrael.
4. C'hwi hoh-eus gwelet hoh-unan petra em-eus greet d'an Ejiptianed, penaoz em-eus ho touget war eskell an erered, ha penaoz em-eus ho kemeret evid beza ganen.
5. Mar selaouit eta va mouez, ha mar mirit va hevredigez, e viot evidon eun teñzor e-touez an oll boblou : rag an oll douar a zo din.
6. Ha c'hwi a vezo din da rouantelez beleien, ha da bobl santel. Setu ar geriou a liviri da vugale Izrael.
7. Moizez a zeuas eta, hag o veza dastumet henaoued ar bobl, e tisplegas an oll heriou en-doa lavaret an Aotrou.

8. Hag an oll bobl a lavaras en eur vouez : Kement en-deus lavaret an Aotrou a raim. Ha Moizez a zougas³⁸ geriou ar bobl d’an Aotrou.
9. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : A-benn nemeur e teuin d’az kavoud en eur goabrenn deñval, evid ma klevo ar bobl ahanon pa gomzin ouzit, ha ma kredo din da virviken. Ha Moizez a roas da anaoud d’an Aotrou geriou ar bobl.
10. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Kee da gaoud ar bobl, ha santella anezi hirio ha warhoaz. Ra walhint o dillad.
11. Ha ra vezint dare evid an trede deiz ; rag a-benn an trede deiz e tiskenno an Aotrou dirag an oll bobl war menez Sinai.
12. Harzou a liki tro-war-dro evid ar bobl, hag e liviri dezo : Likit evez na bignfeh war ar menez, ha na stokfeh ouz e harzou : piou bennag a stoko ouz ar menez, a vezo lakaet d’ar maro.
13. Na vezo ket lakaet an dorn warnezañ, hogen labezet e vezo, pe toullet gand ar sêzou : bezet loen pe zen, ne vevo ket ; pa zeuio ar horn-boud da zen, pignent neuze war ar menez.
14. Ha Moizez o veza diskennet euz ar menez, a zeuas da gavoud ar bobl, hag a zantelas anezi. Goude ma o-doe gwalhet o dillad,
15. e lavaras dezo : Bezit dare evid an trede deiz, ha na dostait ket ouz ho kwragez.
16. Pa oe deuet an trede deiz, hag ar mintin o veza sklêr, setu e klevjont kurunou, hag e weljont luhed o lugerni ; hag eur goabrenn deo a holoas ar menez, hag an drompill a zonas gand eun trouz braz ; hag ar bobl a oa er hamp a oe spontet-braz.
17. Ha Moizez o hasas er-mêz euz ar hamp e diambroug Doue, hag e chomjont e troad ar menez.
18. Oll venez Sinai a zivogede, o veza ma oa diskennet an Aotrou warnezañ e tan, hag ar maged a zave anezañ evel euz a eur forn : hag an oll venez a grene en eun doare spontuz.
19. Son ar horn-boud a greske a-nebeud-da-nebeud ; kreñvoh ha skiltroh e teue. Moizez a gomze, ha Doue a responte outañ.
20. Hag an Aotrou a ziskennas war menez Sinai war lein ar menez, hag a halvass Moizez war gern ar menez ; ha pa oe pignet Moizez eno,
21. e lavaras Doue dezañ : Diskenn, ha ro da anaoud va youl d’ar bobl ; gand aon ne fellfe dezi tremenoud dreist an harzou evid gweloud an Aotrou, ha na zeuje da veza lazet kalz anezo,
22. r’en em zantelo ivez ar veleien a dosta ouz an Aotrou, gand aon na skoje warnezo.
23. Ha Moizez a lavaras d’an Aotrou : ne hello ket ar bobl pigna war menez Sinai ; rag te da-unan a zo test, pa eh-eus gourhemennet, o lavaroud : Laka harzou war-dro d’ar menez ha santellaa ar bobl.
24. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Kee, diskenn ; goude ‘pigni, te hag Aaron ganez. Hogen ar veleien hag ar bobl ne dremenint ket an harzou ha ne bignint ket etrezeg an Aotrou, gand aon n’o lakaje da vervel.
25. Moizez eta a ziskennas etrezeg ar bobl, hag a zisplegas pep tra dezo.

XX. Pennad

An deg gourhemenn. Penaoz e tleer sevel eun aoter.

³⁸ a zougas : implijoud a ra Gonideg ar verb “dougen“ gand e ster e galleg. “a gasas“.

1. Ha Doue a lavaras an oll heriou-mañ :
2. Me eo an Aotrou da Zoue, pehini en-deus da dennet euz a vro an Ejipt, euz a di ar sklaverez.
3. N'az-pezo ket a Zoue all dirazon.
4. Ne ri ket a skeudenn evidout, na taolenn ebed euz ar pez a zo en neñv a-zioh, hag en doaur a-iz, nag euz ar pez a zo en doureier dindan an douar.
5. N'o azeuli ket, ha ne lidi ket anezo. Rag me eo an Aotrou da Zoue, Doue kreñv hag oazuz, pehini, evid fallagriez an tadou, a daol kastiz war ar vugale, beteg an trede hag ar pevare rumm euz ar re a gasa ahanon ;
6. Hag a ra trugarez a-hed mil rumm d'ar re am har hag a vir va gourhemennou.
7. Ne zegemeri ket ano an Aotrou da Zoue en aner : rag an Aotrou ne zalho ket da zianteg an hini a gemero en aner ano an Aotrou, e Zoue.
8. Az-pez koun da zantela deiz ar sabat.
9. E-pad c'hweh devez e labouri, hag e ri da oll labouriou.
10. Hogen ar seizved deiz eo sabat an Aotrou, da Zoue : ne ri labour ebed ennañ, te, na da vab, na da verh, na da vevel, na da vatez, na da loen, nag an diavêziad a vezo en diabarz euz da borziou.
11. Rag e c'hweh devez en-deus greet an Aotrou an neñv hag an douar, hag ar mor, he kement a zo enno ; hag eh ehanas ar seizved deiz : rag-se e vennigas an Aotrou deiz ar sabat, hag e santellaass anezañ.
12. Enor da dad ha da vamm, evid ma vevi pell amzer war an douar a roio dit an Aotrou, da Zoue.
13. Ne lazi ket.
14. Ne gouezi ket en avoultriez.
15. Ne laeri ket.
16. Ne zougi ket a desteni e gaou a-eneb da nesa.
17. Ne hoantai ket ti da nesa : ne hoantai ket e wreg, nag e vevel, nag e vatez, nag e ejenn, nag e azen, na netra euz a gement a zo dezañ.
18. Hogen ar bobl oll a gleve ar hurunou, ha son ar horn-boud : hag hi a wele al luhed hag ar maged a zeue euz ar menez ; hag hi spontet ha leun a estlamm, en em zalhas a-bell ;
19. Hag a lavaras da Voizez : Komz, te, ouzom, hag e selaouim : na gomzet ket an Aotrou ouzom, gand aon na varvjem.
20. Ha Moizez a lavaras d'ar bobl : N'ho-pezet ket a aon, rag Doue a zo deuet evid hoh arnodi hag evid lakaad e zoujañs ennoh, ha na behot ket.
21. Ar bobl a chomas eta a-bell ; ha Moizez a dostaas ouz an deñvalijenn e pehini edo Doue.
22. An Aotrou a lavaras c'hoaz da Voizez : An dra-mañ a liviri da vugale Izrael : C'hwi hoh-eus gwelet penaoz em-eus komzet ouzoh euz an neñv.
23. Ne reot ket evidoh doueed arhant, na doueed aour.
24. Ober a reot din eun aoter bri, hag e kinnigot warnezi ho loened losket, hag hoh ostivou a beoh, ho teñved, hag hoh ejenned, e kement leh ma vezo koun euz va ano : ha me a zeuy d'az kavoud, hag az pennigo.
25. Ma rez din eun aoter vên, na zavi ket anezi gand mein-ben, rag mar likit ar gizell warnezi, e vezo saotret.
26. Ne bigni ket dre zaeziou³⁹ ouz va aoter, gand aon na ve dizoloet da noazder.

³⁹ zaeziou : dre zereziou.

XXI. Pennad

Lezennou diwar-benn ar sklaved, diwar-benn al lazerez hag ar gouliou.

1. Setu ar barnedigeziou a liki dirazo.
2. Mar prenez eur sklav hebreead, e servijo ahanout a-zoug c'hweh vloaz : d'ar seizved ez ay kuit dieub heb rei netra.
3. Gand ar zae gand pehini e vezo deuet ez ay kuit : ma en-doa eur wreg, ez ay kuit e wreg gantañ.
4. Hogen ma en-deus e vestr roet eur wreg dezañ, ha ma he-deus ganet mibien ha merhed, e wreg hag he bugale a vezo d'e vestr, hogen eñ a yelo kuit gand e zae.
5. Ma lavar ar sklav : Me a gar va mestr, ha va gwreg, ha va bugale ; n'ez an ket kuit dieub.
6. E vestr a gaso anezañ dirag ar varnerien, ha goude beza e lakaet ouz postou an nor, e toullo e skouarn gand eur minaoued ; hag hemañ a vezo sklav dezañ da viken.
7. Mar en-deus eur re⁴⁰ gwerzet e verh da vatez matez⁴¹, n'ez ay ket kuit er hiz ma'z eo boazet ar mitizien da vond.
8. Mar tisplij d'ar mestr da behini e oa bet roet, hemañ he lezo da vond kuit ; hogen mar tispriz anezi, n'en-devezo ket ar galloud d'he gwerza da eur bobl a-ziavêz.
9. Hogen mar timez anezi d'e vab, e ray eviti er hiz ma reer d'ar merhed all.
10. Mar ro eur wreg all d'e vab, e roio d'ar plah he gwir dimezi, hag he dillad, ha ne naho ket outi gopr he gwerhted.
11. Ma ne ra ket an tri dra-ze, hi a yelo kuit, heb rei arhant.
12. Neb a skoy gand eun den gand ar c'hoant d'e laza, a vezo lakaet d'ar maro.
13. Hogen e-keñver an hini n'en-deus ket aozet spiou dezañ, hogen e daouarn pehini eo bet lakaet gand Doue, e tiskouezin dit eul leh e pehini e hello tehoud.
14. Ma laz eur re e nesa a-zevri ha gand touellerez e tennot anezañ euz va aoter, evid e gas d'ar maro.
15. Neb en-devezo skoet gand e dad pe gand e vamm, a vezo lakaet d'ar maro.
16. Neb en-devezo laeret eun den, hag en-devo e werzet, mar deo kendrehet war ar gwall, a vezo lakaet d'ar maro.
17. Neb en-devezo droug-pedet gand e dad pe gand e vamm, a vezo lakaet d'ar maro.
18. Mar deu daou zen d'en em rendaela, ha mar sko unan war egile gand eur mên, pe gand e zorn serret, ha ma n'eo ket maro hemañ, hogen mar deo gourvezet war e wele,
19. mar sao, ha ma vale er-mêz war-bouez e vaz ; neb en-devezo skoet gantañ a vezo didamall euz e varo : koulskoude e tistaolo dezañ al labour en-devezo kollet, hag ar pezh en-devezo paeet d'al louzaouereien.
20. Mar sko eur re war e vevel pe war e vatez gand eur wialenn, ha ma varvont etre e zaouarn, e vezo tamalluz a wall.
21. Hogen ma vevont goude eun deiz pe zaou, ne vezo ket kastizet, o veza ma'z int e dra.

⁴⁰ eur re : unan bennag.

⁴¹ matez : "sklav" er skrid galleg.

22. Mar deu tud d'en em rendaela, ha mar sko eur re gand eur wreg vrazez, ha ma he lakaad da ziohani⁴², heb ma varv-hi, e ranko rei evid digoll kement ha ma houlenno an ozah, ha kement a reizo ar varnerien.
23. Hogen ma teu-hi da vervel, e roio-eñ buhez evid buhez.
24. Lagad evdid lagad, dant evid dant, dorn evid dorn, troad evid troad,
25. losk evid losk, gouli evid gouli, bloñs evid bloñs.
26. Mar sko eur re war lagad e vevel pe e vatez, ha ma o laka da veza born, o laosko da vond kuit, evid al lagad en-devezo tennet.
27. Mar tenn ivez eun dant d'e vevel pe d'e vatez, o laosko ivez da vond kuit.
28. Mar sko eun ejenn gand e gerniel war eur gwaz pe war eur vaouez, ha mar deuont da vervel, e vezo labezet an ejenn, ha ne vezo ket debret euz e gig ; ha perhenn an ejenn a vo didamall.
29. Mar deo techet an ejenn da skei gand e gerniel pellig 'zo⁴³ ; ma ne zerr ket e berhenn anezañ goude ma eo bet aliet ; ha mar deu da laza eur gwaz pe eur vaouez, an ejenn a vezo labezet, hag ar perhenn a vezo lazet.
30. Ma houlenner dihaou digantañ, e roio evid dasprena e vuhez, kement a vezo goulennet digantañ.
31. Mar sko gand e gerniel war eur paotr pe eur verh, an heveleb barnedigez a vezo douget.
32. Mar sko war eur mevel pe eur vatez, e vezo roet d'o ferhenn tregont sikl⁴⁴ arhant, hag an ejenn a vezo labezet.
33. Ma en-deus eur re digoret eur puñs, pe kleuzet eur puñs, heb e holoi, ha mar deo kouezet ennañ eun ejenn pe eun azen,
34. perhenn ar puñs a zistaolo talvoudegez al loened, hag al loen maro a vezo dezañ.
35. Mar deu ejenn eur re da hloaza ejenn eun all, ha ma varv hemañ, i a werzo an ejenn beo, hag e rannint an dalvoudegez anezañ : ranna a raint ivez an ejenn maro etrezo.
36. Hogen ma ouie ar perhenn penaoz e skoe an ejenn gand e gerniel pellig a oa, ha ma n'en-deus ket e zerret, e roio-eñ ejenn evid ejenn, hag an ejenn maro a vezo oll dezañ.

XXII. Pennad.

Lezennou diwar-benn al laeroñsi, ar hadaliez, an intañvezed, etc.

1. Ma laer eur re eun ejenn, eun dañvad, ha ma o laz, pe ma o gwerz, e tistaolo pemp ejenn evid eun ejenn, ha pevar dañvad evid eun dañvad.
2. Mar bez kavet eul laer o tispenna pe o toulla eun ti, ha goude beza bet gloazet mar deu da vervel, neh en-devezo skoet gantañ ne vezo ket tamallet e wad dezañ.
3. Ma en-deus greet kement-se goude sav-heol, en-deus greet eul laz-den, hag eñ a dle mervel. Ma n'en-deus ket al laer peadra da zisteurel ar pezh en-deus laeret, e werzo gwerzet e-unan.
4. Mar bez kavet ez-veo en e di ar pezh en-deus laeret, pe eun ejenn, pe eun azen, pe eun dañvad, e tistaolo daou gemend-all.

⁴² da ziohani : da wilioudi.

⁴³ pellig 'zo : abaoe pell.

⁴⁴ sikl : pezh moneiz gand an Hebreed.

5. Mar deu eur re da wasta eur park pe eur winienn, o lakaad e loen da beuri ar pez n'eo ket dezañ, e tistaolo evid an dihaou a vezo prizet, ar pez a vezo gwella en e bark, pe en e winienn heh-unan.
6. Mar bez lakaet an tan da gregi en drein, ha mar deu da zevi ar berniou ed, pe an ed a zo c'hoaz er parkou, neb en-devezo lakaet an tan da gregi a zistaolo ar gaou.
7. Ma en-deus eur re fiziet en e vignon arhant, pe eul lestr bennag, evid e viroud, ha mar deo bet laeret e ti an hini da behini e oa bet roet, mar bez kavet al laer, e tistaolo daou gemend-all.
8. Ma ne gaver ket al laer, perhenn an ti a yelo da gaoud ar varnerien, hag a douo penaoz n'en-deus ket astennet e zorn war dra e amezeg,
9. Evid ober gaou outañ, pe en e ejenn, pe en e azen, pe en e zañvad, pe en e zillad, pe en eun dra all en-defe kollet : abeg pep hini a vezo evesaet mad outañ dirag ar varnerien ; ha ma varnont en e eneb, e tistaolo daou gemend-all d'e amezeg.
10. Ma en-deus eur re fiziet en e amezeg eun azen, pe eun ejenn, pe eun dañvad, pe eul loen all ; ha mar deu da vervel pe da fallaad, pe da veza kemeret gand an enebourien, heb beza bet gwelet gand den,
11. E touo dirag ar varnerien, penaoz n'en-deus ket astennet e zorn war tra e amezeg : hag ar perhenn a gemero da vad al le-ze, hag egile ne vezo ket red dezañ disteurel netra.
12. Mar deo skrapet gand al laer, e tistaolo an dihaou d'ar perhenn.
13. Mar deo lonket gand al loen fero, e tiskouezo d'ar perhenn penaoz eo bet lazet, ha ne zistaolo ket.
14. Ma amprest eur re unan euz ar re-mañ ouz e amezeg, ha mar deu da fallaad pe da vervel, pa ne oa ket e berhenn eno, e vezo red dezañ disteurel.
15. Mar dema ar perhenn eno, ne zistaolo ket egile, dreist-oll ma en-deus e gaset evid tenna gounid dioutañ.
16. Mar deu eur re da walla eur plah yaouank ha ne vezo ket c'hoaz dimezet, ha mar kousk ganti, eh argouraouo anezi, hag he hemero da wreg.
17. Ma ne fell ket da dad ar plah yaouank he rei dezañ, e roy-eñ d'an tad an arhant a roer peurvuia d'ar plahed yaouank evid o dimezi.
18. Ne lezot ket ho puhez gand ar strobinnerien.
19. Piou bennag en em baro gand eul loen, a vezo lakaet d'ar maro.
20. Neb a azeulo doueed all nemed an Aotrou hepken, a vezo lazet.
21. Ne zoanot ket ha ne hlaharot ket an diavêziad ; rag diavêzidi oh bet hoh-unan e bro an Ejipt.
22. Ne reot ket a haou ouz an intañvez nag ouz an emzivad.
23. Ma rit gaou outo, e harmint etrezeg ennon, ha me a zelaouo o garmou :
24. Ha droug a zavo ennon en hoh eneb, ha me ho lakay da vervel gand ar hleze, hag ho kwragez a zeuy da intañvezed, hag ho mibien da emzivad.
25. Ma roez arhant war zistaol d'ar re baour euz va fobl a zo en ho touez, n'ho feukit ket er hiz ma rafe eur gwallwiraer⁴⁵, ha ne waski ket anezo gand kampi.
26. Ma en-deus da nesa roet e zae dit e gouestl, hen distaoli dezañ a-bazr kuz-heol.
27. Rag n'en-deus sae all ebed evid en em wiska, hag evid goloi e gorv, ha pa'z a da gousked : mar garm etrezeg ennon, e selaouin anezañ, o veza ma on trugarezuz.
28. Ne zrougkomzi ket diwar-benn ar varnerien, ha ne villigi ket priñs da bobl.
29. Ne zalei ket da baea an deog hag ar prevedi : rei a ri din ar henta-ganet euz da vibien.

⁴⁵ gwallwiraer : kredour.

30. An heleb tra a ri euz da ejenned hag euz da zeñved : seiz devez e vezo gand e vamm, hag en eizved deiz her roi din.

31. C’hwil a vezo tud santel din. Ne zebrot ket euz ar hig a vezo bet tañveet a-raog gand al loened : e deurel a reot d’ar chas.

XXIII. Pennad

Dlead ar varnerien. Ehan ar seizved bloaz. Goueliou berz.

1. Ne zelaoui ket mouez ar gaou : ha ne unani ket da zorn gand an den fallagr evid dougen eur fals testeni.

2. Ne heuilli ket al lod braz a dud evid ober droug : hag er varn, ne roi ket da hrad da vennoz an darn-vuia, evid disteri dioh ar wirionez.

3. N’az-pezo ket ivez a druez er varn ouz ar re baour.

4. Ma kavez war da hent ejenn pe azen da enebour, hag eñ dianket, degas-eñ dezañ.

5. Mar gwelez azen an hini a gasa ahanout, hag eñ kouezet dindan e veh, n’az i ket e-biou, hogen te a gennerzo anezañ evid e zewel.

6. Ne zinahi ket ar gwir ouz ar paour.

7. Diouz ar gaou e tehi : ne lazi nag an den glan nag an den gwirion ; rag me a gasa an den fallagr.

8. Ne zegemeri ket a roou : rag dalla a reont ar re fur o-unan, hag e lakaont da drei geriou ar re wirion.

9. Ne hlahari ket an diavêziad ; rag te a anavez kalon an diavêzidi ; ha c’hwil a zo bet diavêzidi hoh-unan e bro an Ejipt.

10. E-pad c’hwil vloaz eh hadi douar, hag e tastumi e frouez.

11. Hogen er seizved bloaz e lezi, hag e liki da ziskuiza, evid ma tebro peorien da bobl ; ha ma en voueto al loened diwar ar mêz gand ar pez a vezo chomet a-zilerh. Evel-se e ri ivez e-keñver da winiennou ha da wez oilived.

12. E-pad c’hwil devez e labouri ; hag er seizved deiz eh ehani, evid ma tiskuizo da ejenn ha da azen, ha ma en em freskay mab da vatez, hag an diavêziad.

13. Mirit kement em-eus lavaret deoh. Ne douot ket dre ano an doueou a-ziavêz, ha ne zeuy ket o ano er-mêz euz ho kenou.

14. Teir gwech ar bloaz e lidot gouel din.

15. Gouel ar bara dihoell a viri. Debri a ri, evel ma em-eus e hourhemennet dit, bara dihoell e-pad seiz devez, e amzer miz ar frouez nevez, e pe amzer out deuet er-mêz euz an Ejipt : n’en em ziskouezi ket dirazon da zaouarn goullo.

16. Ha gouel ar mederez hag ar henta frouez euz da labour, hag euz a-gement az-pezo hadet er park : hag ivez gouel diwez ar bloaz, pa’z-pezo dastumet oll frouez da bark.

17. Teir gwech er bloaz da oll wazed en em ziskouezo dirag an Aotrou da Zoue.

18. Ne ginnigi ket, gand goell en da di, gwad al loened a lazi em enor, ha ne chomo ket e-barz lard va gouel beteg ar mintin.

19. Kenta frouez da zouar a zougi da di an Aotrou da Zoue. Ne boazi ket ar menn-gavr a zen e vamm.

20. Setu me a gaso va êl, pehini a yelo en da raog, hag a viro ahanout en hent, hag az lakay da vond e-barz al leh em-eus aozet dit.

21. Gra stad anezañ, ha selaou e vouez, ha na zispriz ket anezañ, petra bennag na zistaolo ket deoh ho pehed, hag em ano-me e komz.

22. Mar selaouez e vouez, ha ma rez kement a lavaran dit, e vezin enebour da enebourien, hag e hlaharin ar re az klaharo.
23. Va êl a gerzo en da raog, hag a lakay ahanout da vond e bro an Amorreed, hag an Heteed, hag ar Ferezeed, hag ar Gananeed, hag an Heveed, hag ar Jebuzeed, pere a wastin.
24. Ne azeuli ket o doueou, ha ne ri ket a lid dezo : ne heuilli ket o skwer ; hogen o dispenna a ri, hag e torri o skeudennou.
25. Servija a reot an Aotrou ho Toue, evid ma vennigin ho para hag ho tour, ha ma kasin kuit pep kleñved euz ho touez.
26. Ne vezo ket en da vro a wreg distrijuz⁴⁶ ha brehagn : leunia a rin niver da zeiziou.
27. Lakaad a rin da vond en da raog ar spont ahanon ; hag e likiin da vervel an oll boblou e pere ez i : hag e likin da oll enebourien da drei o hein dirazout.
28. Kas a rin da genta sardoned, pere a lakay da dehoud an Heveed, hag ar Gananeed, hag an Heteed, a-barz ma'z i en o bro.
29. N'o hasin ket a-zirazoud en eur bloaz hepken, gand aon na ve troet an douar en eun distro, ha na zeuje da greski en da eneb al loened fero.
30. A nebeud da nebeud o hasin kuit a-zirazoud, beteg ma kreski, ha ma vezi perhenn ar vro.
31. Lakaad a rin da harzou adaleg ar mor Ruz beteg mor ar Filistined, hag adaleg an distro beteg ar ster. Lakaad a rin etre ho taouarn ar re a vezo o chom er vroze, hag o lakaad a rin da dehi dirazoh.
32. Ne ri ket a gevredigez ganto na gand o doueed.
33. Ne chomint ket en da vro, gand aon na zeujent d'az lakaad da behi em eneb, o servija o doueed ; ar pez a zeufe heb mar da wall skwer dit.

XXIV. Pennad

Moizez a bign war ar menez.

Chom a ra eno daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez.

1. Doue a lavaras ivez da Voizez : Pign etrezeg an Aotrou, te hag Aaron, Nadab hag Abiu, hag an deg henaour ha tri-ugent euz a Izrael, hag eh azeulot a-bell.
2. Moizez hepken a bigno beteg an Aotrou, hag i ne dostaint ket ; hag ar bobl ne bigno ket gantañ.
3. Moizez a zeuas eta hag a zisplegas d'ar bobl oll heriou an Aotrou hag e hourhemennou : hag an oll bobl a lavaras a-unan : Ni a ray kement en-deus lavaret an Aotrou.
4. Hogen Moizez a skrivas oll lavariou an Aotrou : hag o veza savet diogh ar mintin, eh aozas eun aoter e troad ar menez, gand daouzeg mên diogh daouzeg breuriez Izrael.
5. Hag eñ a gasas tud yaouank euz a vibien Izrael, pere a ginnigas loened losket, hag a lazas loened habask d'an Aotrou, da lavaroud eo leueou.
6. Moizez a gemeras an hanter euz ar gwad, hag a lakaas anezañ e kopou ; hag e skuillas an dilerh war an aoter.
7. Hag o kemeroud levr ar gevredigez, e lennas dirag ar bobl pehini o veza e glevet, a lavaras : Ober a raim kement en-deus lavaret an Aotrou, hag e sentim outañ.

⁴⁶ a wreg distrijuz : a wreg o tiforha.

8. Neuze eñ o kemeroud ar gwad, a skuillas anezañ war ar bobl, hag a lavaras : Hemañ eo ar gwad euz ar gevredigez en-deus greet an Aotrou ganeoh, hervez an oll heriou-mañ.

9. Neuze e pignas Moizez hag Aaron, Nadab hag Abiu, hag an deg henaour ha tri-ugent euz a Izrael.

10. Hag e weljont Doue Izrael, ha dindan e dreid evel eun dra greet gand mên safir, hag evel an neñv, pa eo digoabr.

11. Doue ne astennas ket e zorn war ar re euz a vugale Izrael pere a oa chomet war-lerh : Doue a weljont, hag e tebrjont hag eh evjont.

12. Hogen an Aotrou a lavaras da Voizez : Pign war ar menez etrezeg ennon, ha chom eno : ha me a roy dit taolennou mên, al lezenn hag ar gourhemennou em-eus skrivet, evid ma kelenni anezo.

13. Moizez a zavas gand Jozue, e ofiser⁴⁷, ha pa bigne Moizez war menez Doue,

14. e lavaras d'an henaoured : Gortozit amañ beteg ma tistroim d'ho kavoud. Bez' hoh-eus ganeoh Aaron hag Hur : ma c'hoarvez eur reustl bennag, e reot dioh o mennoz-i.

15. Ha pa oe pignet Moizez, eur goabrenn a holoas ar menez :

16. Ha gloar an Aotrou a chomas war Sinai, oh e holei gand eur goabrenn a-hed c'hweh devez : hogen d'ar seizved devez, Doue a halvas Moizez euz a-greiz an deñvalijenn.

17. Doare gloar an Aotrou a oa evel eun tan losk war lein ar menez, dirag bugale Izrael.

18. Ha Moizez o treuzi ar goabrenn a bignas war ar menez : hag e chomas eno daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez.

XXV. Pennad

Penaoz e tle beza greet an arh, an daol, ar hantolor.

1. Neuze an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

2. Lavar da vugale Izrael degas din o roou : o degemeroud a reot digand kement hini o hinnigo a youl vad.

3. Hogen setu an traou a dleit da zegemeroud : aour hag arhant hag arem.

4. Ha mezer glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, ha lien moan, ha bleo gevr.

5. Ha krehin maout livet e ruz, ha krehin-glaz-ruz, ha koad setim⁴⁸.

6. Eoul evid aoaza ar hleuzeuriou, louzou c'hwez-vad da lakaad an trelou⁴⁹, hag a beb louzou c'hwez-vad all,

7. Mein oniks, ha mein talvoudegez vraz evid kinkla an efod⁵⁰ hag ar rational⁵¹.

8. Eur santual a raint din, hag e chomin en o hreiz ;

9. Hervez an oll heñvededigez euz an tabernakl a ziskouezin dit, hag euz an oll listri a vezo red evid al lidou. evel-henn her greet :

⁴⁷ e ofiser : an hini a zervije anezañ.

⁴⁸ setim : akasia.

⁴⁹ an trelou : an traou e vezer trellet ganto.

⁵⁰ an efod : eur zae a veze lakaet gand beleien an Hebreed.

⁵¹ rational : eul lien a veze lakaet war o feultrin gand beleien an Hebreed.

10. Eun arh a reot gand koad setim, pehini en-devezo daou ilinad hanter a hed, eun ilinad a led, hag eun ilinad hanter a uhelder.
11. He golei a ri gand aour ar haerra en diabarz hag en diavêz, hag e ri war e gorre eur gurunenn aour a yelo tro-war-dro.
12. Lakaad a ri peder lagadenn aour e pevar horn an arh, diou lagadenn en eun tu, ha diou en tu all.
13. Sparlou a ri ivez gand koad setim, hag e holei anezo gand aour.
14. Hag o lakaad a ri el lagadennou a zo e korniou an arh, evid dougen an arh ganto.
15. Ar re-mañ a vezo atao el lagadennou, ha ne vezint biken tennet anezo.
16. Lakaad a ri en arh an testeni a roin dit.
17. Ar golher a ri ivez gand aour ar glanna, pehini en-devezo daou ilinad hanter a hed, hag eun ilinad hanter a led.
18. Daou cherubin⁵² aour, greet gand ar morzol, a liki en daou benn euz an orakl.
19. Eur cherubin a vezo en eur penn, hag eun all er penn all.
20. Displega a raint o eskell, hag e holoit an daou du euz ar golher hag euz an orakl⁵³ : selloud a raint an eil ouz egile, o trei o fenn ouz ar golher a holoy an arh,
21. E pehini e liki an testeni a roin dit.`
22. Ahano e kelennin ahanout, hag e komzin ouzit diwar ar golher, hag euz a-greiz an daou cherubin a vezo war an arh a desteni, diwar-benn kement a hourhemennin drezout da vugale Izrael.
23. Ober a ri ivez eun daol gand koad setim, pehini he-devezo daou ilinad a hed, eun ilinad a led, hag eun ilinad hanter a uhelder.
24. Gand aour ar glanna he golei, hag eur vevenn aour a ri war-dro.
25. War ar vevenn e liki eur gurunenn gompéz a bevar biz a uhelled : ha war houmañ eur gurunenn all alaouret.
26. Ober a ri ivez peder lagadenn aour, a liki e pevar horn an daol, unan war bep troad.
27. Al lagadennou aour a vezo dindan ar gurunenn, evid lakaad sparlou enno, ma vezo gellet dougen an daol.
28. Gand koad setim e ri ivez ar sparlou da zougen an daol hag e holoï anezo gand aour.
29. Ober a ri ivez gand aour ar glanna pladou, kopou, ezañsouerou ha tasou, e pere e tleer kinniga ar skuilladegou.
30. Lakaad a ri war an daol ar baraou a ginnig a dle chom bepred dirazon.
31. Ober a ri gand aour ar glanna ha gand ar morzol eur hantoler hag e walenn, hag e varrou, hag e gopou, hag e volotou, hag e lili, a zeuy anezañ e-unan.
32. C’hweh barr a zeuy er-mêz euz e gosteziou, tri en eun tu, ha tri a eun tu all.
33. Tri hop e doare kraoñ a vezo ouz eur barr, hag eur bolot hag eul lilienn : hag ivez tri hop e doare kraoñ ouz ar barr all, hag eur bolot hag eul lilienn ; hennez a vezo labour ar c’hweh barr, pere a dle sevel euz ar walenn.
34. Er hantolor e-unan e vezo pevar hop e doare kraoñ, hag eur bolot hag eul lilienn dre bep hini.
35. Bolotou a vezo e tri leh euz an daou varr, pere a ray c’hweh en oll, a zavo euz an heveleb gwalenn.
36. Ar bolotou eta hag ar barrou a vezo euz anezañ ; oll e vezint greet gand ar morzol hag euz aour ar glanna.

⁵² cherubin : eun êl euz a eil reñk.

⁵³ orakl : eun daolenn en aour, bet lakaet war gorre an arh.

37. Ober a ri seiz kleuzeur, hag e liki anezo war ar hantoler evid ma houlaouint dirag.
38. Gevellou a ri ivez, ha listri evid mouga ar poulhennou, hag i greet gand aour ar glanna.
39. Ar hantolor gand e oll listri a bouezo eun talant euz an aour ar glanna.
40. Sell, ha gra hervez ar skwer a zo bet diskouezet dit war ar menez.

XXVI. Pennad

An Tabernakl. E holoou

1. Evel-henn e ri an tabernakl. Bez'e vezo deg gouel lien moan troet, a liou glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet ; hag e ri warnezo meur a labour a vroderez.
2. An hed euz a eur ouel a vezo a eiz ilinad warn-ugent, hag al led a vezo euz a bevar ilinad. Euz a eur vent e vezo an oll oueliou.
3. Pemp gouel a vezo staget an eil oh eben, hag ar pemp all a vezo ivez staget an eil oh eben.
4. Liammou glaz a liki ouz kosteziou hag ouz pennou ar goueliou, evid ma hellint beza staget an eil oh eben.
5. Pep gouel he-devezo hanter-kant liamm a bep tu, lehiet en heveleb doare ma en em gavo eul linenn ouz eul liamm all, ha ma vezo gellet staga an eil oh egile.
6. Ober a ri ivez hanter-kant lagadenn aour, gand pere e vezo staget ar goueliou an eil oh eben, evid ma vezo greet ganto eun tabernakl hepken.
7. Ober a ri ivez unneg pallenn bleo gevr, evid golei gorre an tabernakl.
8. An hed euz a eur pallenn a vezo euz a dregont ilinad, hag al led a vezo euz a bevar ilinad : euz a eur vent e vezo an oll balennou.
9. Pemp anezo a stagi an eil ouz eben, hag ar c'hweh all a stagi ivez an eil oh eben, en heveleb doare ma plegi daou-hanter ar c'hwehved e penn gorre an tabernakl.
10. Lakaad a ri ivez hanter-kant liamm ouz bevenn unan euz ar pallennou, evid ma vezo gellet e staga oh egile, hag hanter-kant liamm ouz bevenn an eil, evid e staga ouz an hini kenta.
11. Ober a ri hanter-kant lagadenn arem, a vezo staget oh ar pallennou, evid ma vezo greet ganto oll eur golo hepken.
12. Hogen gand ar pezh a chomo goude beza goloet an tabernakl, da lavaroud eo eur pallenn a vezo ohpenn, e liki eun hanter da holei an diadrenñ euz an tabernakl.
13. Eun ilinad a vezo a-ispill en eun tu, hag eun ilinad en tu all, hag ar pezh a vezo ohpenn er pallennou, a holoi an daou du euz an tabernakl.
14. Ober a ri ivez eur golo all gand krehin maout livet e ruz ; ha war henez all eur golo all a grehin, livet e glaz-ruz.
15. Ober a ri ivez elfennou koad setim evid lakaad en o zav ouz an tabernakl.
16. Pep hini euz ar re-mañ he-devezo deg ilinad hanter a led.
17. War gosteziou an elfennou e vezo greet diou haran, gand pere e vezo frammet en eil elfenn gand eben : hag an oll elfennou a vezo reizet evel-se.
18. Ugent anezo a vezo en tu a zell ouz ar hreisteiz.
19. Lakaad a ri teuzi daou-ugent steudenn arhant, evid ma vezo douget peb elfenn war ziu steudenn a skoro an daou gorn anezo.
20. Ugent elfenn a vezo ivez en eil tu euz an tabernakl, pehini a zell ouz an hanternoz.
21. Daou-ugent steudenn arhant o-devezo, peb elfenn o veza douget war diou steudenn.

22. E kostez an tabernakl a zell ouz ar huz-heol, e ri c’hweh elfenn,
23. Ha diou all a vezo savet er horniou a-dreñv an tabernakl.
24. Hag i a vezo framm adaleg ar sol beteg al lein, ha gand eun heveleb framm e vezint dalhet. Eun heveleb framm a zalho ivez an diou elfenn a vezo lakaet er horniou.
25. Eiz elfenn a vezo en oll, pere o-devezo c’hwezeg steudenn arhant ; diou steudenn a niveri evid eun elfenn.
26. Ober a ri sparlou gand koad setim, pemp evid derhel an elfennou en eur hostez euz an tabernakl,
27. Pemp all er hostez all, hag an heveleb niver war-zu ar huz-heol :
28. Hag ar re-mañ a yelo a-dreuz d’an oll elfennou, euz an eil penn d’egile.
29. Gand aour e holoi an elfennou, hag e liki outo lagadennou aour, evid derhel ar sparlou ganto : ar re-mañ a holoi ivez gand taolennou aour.
30. Sevel a ri an tabernakl hervez ar skwer a zo bet diskouezet dit war ar menez.
31. Ober a ri ivez eur ouel a liou glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, greet gand liou moan troet, war pehini e vezo greet labour broderez e meur a zoare.
32. E skourra a ri ouz pevar beul setim, pere a vezo goloet gand aour ; hag o fennou a vezo a aour hag o steudennou a arhant.
33. Ar ouel a vezo dalhet gand lagadennou. En diabarz anezi e liki arh an testeni ; hag ar ouel a ranno ar Sant diou Sant ar Zent.
34. Lakaad a ri ivez ar golher war arh an testeni e Sant ar Zent.
35. Lakaad a ri an daol en diabarz euz ar ouel ; hag ar hantoler dirag an daol e tu an tabernakl a zo er hreisteiz ; rag an daol en em gavo e tu an hanternoz.
36. Ober a ri ivez eun telt dirag dor an tabernakl, hag an telt a vezo a liou glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, greet gand lien moan troet, ha goloet a vroderez.
37. Skourra a ri an telt oh pemp peul setim goloet a aour : ha pennou ar re-mañ a vezo a aour, hag o steudennou a arem.

XXVII. Pennad

An Aoter. Leur an nor-dal.

1. Ober a ri ivez eun aoter gand koad setim, pehini he-devezo pemp ilinad a hed, ha kemend-all a led, da lavaroud eo e vezo pevar-horneg, ha tri ilinad a uhelder.
2. Pevar horn a zavo euz a bevar hogn an aoter ; hag he golei a ri gand arem.
3. Ober a ri ivez ezommou an aoter pezelioù evid dastumi al ludu, ha gevellou, ha gultaniou⁵⁴, ha pezelioù-tan : ha gand arem e ri an oll listri-ze.
4. Ober a ri ivez eur gael arem e doare eur roued ; hag e pevar horn anezi e vezo peder lagadenn arem,
5. Pere a liki dindan oaled an aoter : hag ar gael a yelo beteg kreiz an aoter.
6. Ober a ri ivez an aoter daou sparl koad setim a holoi gand taolennou arem.
7. O lakaad a ri el lagadennou en daou du euz an aoter, evid o dougen.
8. Ne ri ket eun aoter fetiz ; hogen goullo ha kleuz e vezo, evel ma eo bet diskouezet dit war ar menez.
9. Ober a ri ivez leur an tabernakl ; hag e tu ar hreisteiz e vezo teltou a lien moan troet : pep tu en-devezo kant ilinad a hed ;

⁵⁴ gultaniou : e geriadur ebed. Bet troet e galleg gand «fourchetes».

10. Bez' e vezo ugent peul arem gand o steudennou ; hag o fennou gand ho kizelladuriou a vezo a arhant.
11. Bez' e vezo ivez e tu an hanternoz teltou a gant ilinad a hed, ugent peul, ha kemend-all a steudennou arem ; hag o fennou gand o hizelladuriou a vezo a arhant.
12. War led al leur a zell ouz ar huz-heol, e vezo teltou pere o-devezo hanter-kant ilinad, ha deg peul, gand kemend-all a stedennou.
13. Led al leur a zell ouz ar sav-heol, a vezo ivez euz a hanter-kant ilinad.
14. Lakaet e vezo war eun tu teltou a bemzeg ilinad, gand tri beul, ha kemend-all a steudennou :
15. Hag en tu all e vezo lakaet teltou a bemzeg ilinad, gand tri beul, ha kemend-all a steudennou.
16. E porz al leur e ri eun telt a ugent ilinad, a liou glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, greet gand lien moan troet, ha goloet a vroderez : pevar beul en-devezo, ha kemend-all a steudennou.
17. An oll beuliou euz al leur a vezo gwisket tro-war-dro gand taolennou arhant : o fennou a vezo a arhant, hag o steudennou a arem.
18. Al leur he-devezo kant ilinad a hed, hanter-kant a led, ha pemp a uhelder : he goueliou a vezo a lien moan troet hag he steudennou a arem.
19. Oll listri an tabernakl en oll giziou hag en oll lidou, ken evid ar peuliou, ken evid al leur, a vezo greet a arem.
20. Kemenn da vugale Izrael degas dit eoul ar glanna euz a wez olived, a vezo bet pilet en eul laouerig, evid ma losko bepred ar hleuzeuriou.
21. E tabernakl an testeni, er-mêz euz ar ouel a zo a-skourr ouz arh an testeni, Aaron hag e vibien a aozo anezo evid ma houlaouint beteg ar mintin dirag an Aotrou. Al lid-ze a bado bepred a ouenn da ouenn e-touez bugale Izrael.

XXVIII. Pennad

Gwiskou ar veleien.

1. Laka Aaron da vreur hag e vibien da dostaad ouzit euz a greiz bugale Izrael, evid ma raint ar garg a velegiez dirazon : Aaron, Nadab hag Abin, Eleazar hag Itamar.
2. Eur gwisk santel a ri da Aaron, da vreur, evid ar sked hag ar hinklerez.
3. Ha te a gomzo ouz ar re oll a zo fur a galon, hag am-eus karget gand ar spered a boell, evid ma raint gwiskou da Aaron, gand pere e vezo santellaet, hag e servijo ahanon.
4. Setu ar gwiskou a raint : ar rational, hag an efod, ar zae a-zindan hag ar gamps, ar mitr hag ar gouriz. Ar re-ze eo ar gwiskou santel a vezo greet da Aaron da vreur ha d'e vibien, evid ober dirazon ar garg a veleg.
5. Kemeroud a raint, evid ober anezo, aour ha mezer glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, ha lien moan.
6. An efod a raint gand aour, ha mezer glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, ha lien moan troet, gand labour ar vroderien.
7. An efod en-devezo er penn uhella diou vevenn en daou du, an eil dirag eben, ha ne raint goude nemed unan.
8. Ar wiadenn heh-unan hag an oll labour disheñvel a vezo a aour, hag a vezer glaz, hag a limestra, hag a dane diou wech livet, hag a lien moan troet.
9. Kemeroud a ri ivez daou vên oniks, war bere e kizelli anoiou bugale Izrael.
10. C'hweh ano war eur mên, hag ar c'hweh all war ar mên all, hervez an heul euz o ganedigez.

11. Gand labour ar hizeller hag hini ar mêner, e kizelli warnezo anoiou bugale Izrael goude beza o frammet en aour a ray an dro dezo.
12. O lakaad a ri en daou du euz an efod, e koun euz a vibien Izrael. Hag Aaron a zougo o anoiou dirag an Aotrou war e ziouskoaz, evid eñvor.
13. Ober a ri ivez bazouigou aour,
14. Ha diou chadennig euz an aour ar glanna, a bere al lagadennou a yelo an eil en eben, hag o lakaad a ri er bazouigou.
15. Ober a ri ivez rational ar varnedigez gand labour ar vroderien, gweet evel an efod gand aour, ha mezer glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, ha lien moan troet.
16. Pevar-horneg ha daoubleget e vezo : eur rahouenn en-devezo a hed hag a led.
17. Lakaad a ri ennañ peder reñkad mein : ar reñkad kenta a vezo ar sardon⁵⁵, hag an topaz⁵⁶, hag an emerodenn⁵⁷ :
18. En eil reñkad e vezo ar harboukl, hag ar safir, hag ar jasp :
19. En drede reñkad e vezo ar harboukl, hag an agata, hag an ametist :
20. Er bevare reñkad e vezo ar hrizolit, hag an oniks, hag ar beril⁵⁸. En aour e vezint frammet hervez o reiz.
21. Anoiou mibien Izrael a vezo warnezo : ha daouzeg ano a vezo kizellet hervez o daouzeg breuriez, eun ano war beb mên.
22. Ober a ri ivez er rational chadennou euz an aour ar glanna, a bere al lagadennou a yelo an eil en eben.
23. Ha diou lagadenn aour, pere a liki e penn ar rational en daou du.
24. Hag e liki an diou chadenn aour e-barz al lagadennou a vezo e bevennou ar rational.
25. Hag e stagi an daou benn euz an diou chadenn ouz diou vazig a vezo en daou du euz an efod a zell ouz ar rational.
26. Ober a ri ivez diou lagadenn aour, pere a liki e pennou ar rational, er bevennou a zo e traoñ an efod, hag a zell ouz an diabarz anezañ.
27. Ober a ri c'hoaz diou lagadenn aour, a liki en daou du euz a draoñ an efod, a zello ouz dremm ar framm izella, evid ma hello beza unvanet gand an efod,
28. Ha ma vezo staget lagadennou ar rational ouz lagadennou an efod gand eul liammig glaz, evid ma chomint stag an eil oh egile, ha ne hello ket ar rational en em ranna diou an efod.
29. Aaron a zougo anoiou mibien Izrael war rational ar varnedigez en-devezo war boull e galon, pa'z ay e-barz ar santuar evel eun eñvor peurbaduz dirag an Aotrou.
30. Lakaad a ri war rational ar varnedigez, KELENNADUREZ HA GWIRIONEZ, a vezo war boull kalon Aaron, pa'z ay e-barz dirag an Aotrou : hag e tougo bepred barnedigez bugale Izrael war boull e galon dirag an Aotrou.
31. Ober a ri ivez sae an efod, a vezo oll a liou glaz.
32. Bez' e vezo eun toull er penn uhella anezi hag en he hreiz, hag eur gourem war he zro, evel ma reer peurvua e bevennou an dillad, gand aon na rogje.
33. Hag er penn izella, e lost ar zae, tro-war-dro, e ri grenadou a liou glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, gand kleirigou en o mesk ;
34. En heveleb doare ma vezo eur hlohig aour hag eur grenad ; ha c'hoaz eur hlohig aour all hag eur grenad all.

⁵⁵ sardon : doare mên implijet evid ober braoigou.

⁵⁶ topaz : doare mên implijet evid ober braoigou.

⁵⁷ emerodenn : doare mên implijet evid ober braoigou.

⁵⁸ beril : mên prisiuz (evel ar re all).

35. Hag Aaron a wisko ar zae-ze pa raio e garg, evid ma vezo klevet ar son pa'z ay e-barz ar santuar dirag an Aotrou, ha pa zeuy er-mêz, hag evid na varvo ket.

36. Ober a ri ivez eun daolenn aour ar glanna, war behini e liki da gizella gand eur hizeller mad : AR ZANTELEZ D'AN AOTROU.

37. He staga a ri war an diarenn gand eul liammig glaz,

38. War dal ar beleg braz. Hag Aaron a zougo an oll fallagrieziou o-devezo greet bugale Izrael en traou santel, en o gouestlou hag en o roou. An daolenn-ze a vezo bepred war e dal, evid ma vezo trugarezuz an Aotrou en o heñver.

39. Ober a ri ivez eur zae striz a lien moan, hag an diarenn a lien moan, hag eur gouriz brodet.

40. Saeou lin a ri evid mibien Aaron, ha gourizou ha tiarennou evid ar sked hag ar hinklerez.

41. Gand ar re-ze oll e wiski Aaron da vreur hag e vibien. Dezo oll e sakri o daouarn, hag e santelli anezo, evid ma vezint beleien din.

42. Ober a ri ivez bragou lin dezo, evid ma holoint o mezegez, adaleg an diougroazell beteg traoñ an divorzed.

43. O lakaad a ray Aaron hag e vibien pa'z aint e-barz tabernakl an testeni, pe pa dostaint ouz an aoter evid servija er santuar, gand aon na rajent fallagriez, ha na varvjent. Ar hemenn-mañ a vezo da viken da Aaron, ha d'e ouenn en e houde.

XXIX. Pennad

Euz ar sakrifisoù

1. Setu petra a ri evid o zakri da veleien. Kemer euz an tropell eul leue ha daou dourh dinamm.

2. Ha baraou dihoell, ha gwastellou ivez dihoell, a vezo glebiet gand eoul, ha tourtellou ivez dihoell lardet gand eoul. Kement-se oll a ri gand flour gwiniz.

3. Hag o veza o lakaet en eur havell, o hinnigi din. Neuze e tegasi al leue hag an daou dourh.

4. Lakaad a ri Aaron hag e vibien da dostaad ouz dor an tabernakl a desteni : ha pa'z-pezo gwalhet gand dour an tad hag e vibien,

5. E liki da Aaron e wiskou, da lavaroud eo, ar zae lin, hag ar zae hlaz, en efod hag ar rational ; hag e stardi anezo gand eur gouriz.

6. Hag e liki an diarenn war e benn, hag an daolenn zantel war an diarenn.

7. Neuze e skuilli eoul sakr war e benn : hag en doare-ze e vezo sakret.

8. Lakaad a ri e vibien da dostaad, hag e liki dezo saeou lin, hag e stardi anezo gand gourizou.

9. Evel-se e ri da Aaron ha d'e vibien, hag e liki peb a diarenn dezo : hag i a vezo beleien din en eul lid paurbaduz. Goude ma az-pezo sakret o daouarn,

10. E tegasi al leue dirag tabernakl an desteni ; hag Aaron hag e vibien a lakay o daouarn war e benn,

11. Ha te a lazo anezañ dirag an Aotrou, e-tal dor tabernakl an testeni.

12. Kemeroud a ri euz a wad al leue, a liki gand da viz war gorniou an aoter ; hag e skuilli an dilerh euz ar gwad ouz troad an aoter.

13. Kemeroud a ri ivez an oll lard a holo ar bouzelou, ha krohenenn an avu, hag an digroazell, hag al lard a zo warnezo, hag e kinnigi anezo goude beza o losket war an aoter.

14. Hogen kig al leue, hag e grohenn, hag e veuzel a loski er-mêz euz ar hamp, o veza ma'z int eun ostiv⁵⁹ evid ar pehed.
15. Kemeroud a ri unan euz an tourhed, hag Aaron hag e vibien a lakay o daouarn war e benn.
16. Ha pa'z-pezo e lazet, e kemeri euz e wad, hag e skuilli anezañ war-dro an aoter.
17. Neuze e trohi an tourh a-bastellou, ha goude beza gwalhet ar bouzellou hag an treid, e liki anezo war an tammou kig trohet, ha war e benn.
18. Hag e kinnigi an oll dourh oh e leski war an aoter : kinnig an Aotrou eo, hag eun ostiv a hwez-vad d'an Aotrou.
19. Kemeroud a ri an tourh all, hag Aaron hag e vibien a lakay o daouarn war e benn.
20. Ha pa'z-pezo e lazet, e kemeri euz e wad, a liki war penn izella skouarn zehou Aaron hag e vibien, ha war meud o dorn dehou hag o zroad dehou ; hag e skuilli an dilerh euz ar gwad war an aoter tro-war-dro.
21. Neuze e kemeri euz ar gwad a vezo war an aoter, hag euz eoul ar zakradurez, hag e strinki anezo war Aaron ha war e zillad, war e vibien ha war o dillad. Ha goude beza o zakret, i hag o dillad,
22. E kemeri lard an tourh, hag al lost, hag al lard a holo ar bouzellou, ha krohenenn an avu, hag an digroazell, hag al lard a zo warnezo, hag ar skoaz dehou, o veza m'z eo eun tourh a ouestlerez :
23. Hag eun dorz-vara, hag eur wastell glebiet gand eoul, hag eun dourtell euz a gavell ar bara dihoell, a zo bet lakaet dirag an Aotrou.
24. Kement-se a liki war daouarn Aaron hag e vibien, hag e santelli anezo o sevel ar reou-ze dirag an Aotrou.
25. O hemeroud a ri euz o daouarn, hag o loski war aoter ar sakrifis-losk, evel eur c'hwez c'hwek dirag an Aotrou, o veza ma eo e ginnig.
26. Kemeroud a ri ivez bruched an tourh, gand pehini e vezo bet sakret Aaron, hag e santelli anezañ oh e zevel dirag an Aotrou ; hag e vezo da lod.
27. Santella a ri ivez ar bruched a zo bet gouestlet, hag ar skoaz eh-eus distaget diou an tourh,
28. Gand pehini e vezo bet sakret Aaron hag e vibien ; ha miret e vezint gand bugale Izrael e lod Aaron hag e vibien dre eur gwir peurbaduz : o veza ma'z int ar preñvidi hag ar hrevennou kenta euz ar viktimou a beoh a ginnigont d'an Aotrou.
29. An dillad santel en-devezo douget Aaron, a vezo d'e vibien en e houde, evid ma vezint sakret enno, ha ma vezo sakret o daouarn.
30. An hini euz e vibien a vezo bet lakaet da vikel braz en e leh, hag a yelo e-barz an tabernakl a desteni, evid ober e garg er santuar, a wisko an dillad-se e-pad seiz devez.
31. Kemeroud a ri ivez tourh ar gouestlerez, hag e liki ar hig da boaza el leh santel :
32. Hag Aaron hag e vibien a zebro anezañ. Debri a raint ivez, e-tal dor an tabernakl a desteni, ar baraou a vezo er havell,
33. Evid ma vezo eur sakrifis a beoh, ha ma vezo santellaet daouarn ar re her hinnigo. An diavêziad ne zebro ket anezo, o veza ma int bet santellaet.
34. Mar chom eun dra bennag euz ar hig gouestlet, pe euz ar baraou beteg ar mintin, e tevi an dilerh en tan : ne vezint ket debret, o veza ma int bet santellaet.

⁵⁹ eun ostiv : eur sakrifis.

35. Kement em-eus gourhemennet dit a ri e-keñver Aaron hag e vibien. Sakri a ri o daouarn e-pad seiz devez.
36. Hag e kinnigi bemdez eul leue evid an diskarg euz ar pehed. Glana a ri an aoter goude m'az-pezo lazet an ostiv a ziskarg ; hag e lardi anezi evid he santella.
37. Glana ha santella a ri an aoter e-pad seiz devez, hag e vezo santel-braz : kement hini a stoko outi a vezo santellaet.
38. Setu petra a ginnigi war an aoter : bemdez hag heb ehan e lazi daou oan bloaz.
39. Eun oan dioh ar mintin, hag egile war ar pardaez.
40. Gand an oan kenta e kinnigi an degved lodenn euz ar flour gwiniz, glebiet gand eoul gwasket, ar palevarz euz a eun hin⁶⁰, ha kemend-all a win evid ar skuilladeg.
41. An oan all a ginnigi war ar pardaez, en heveleb doare ma on-eus lavaret diwar-benn kinnig ar mintin ; eun ostiv a hwez-vad eo.
42. Ar sakrifis eo a dle beza kinniget d'an Aotrou dre eur hinnig peurbaduz en ho touez e-tal dor tabernakl an testeni dirag an Aotrou, e peleh en em gavin evid komz ouzit.
43. Ahano e roin va gourhemennou da vugale Izrael, hag an aoter a vezo santellaet gand va gloar.
44. Me a zantellao ivez tabernakl an testeni gand an aoter, hag Aaron hag e vibien, evid ma vezint beleien din.
45. Ha me a chomo e-kreiz bugale Izrael, hag a vezo da Zoue dezo.
46. Hag i a ouezo penaoz eo me an Aotrou o Doue, en-deus o zennet euz a zouar an Ejipt, evid chom en o hreiz, me an Aotrou, o Doue.

XXX. Pennad.

Aoter al louzou c'hwez-vad. Ar hemmesk anezo.

1. Ober a ri ivez eun aoter gand koad setim, evid devi louzou c'hwez-vad.
2. Eun ilinad he-devezo a hed, hag eun ilinad a led, da lavaroud eo e vezo pevar-horneg ; ha daou ilinad a uhelder. Ha kerniel a zavo anezi.
3. He gwiska a ri gand aour ar glanna, ken ar gael, ken ar speuriou tro-war-dro, hag he herniel. Ober a ri ivez eur gurunenn aour tro-war-dro.
4. Ha diou lagadenn aour a bep tu dindan ar gurunenn, evid lakaad enno parlou da zougen an aoter.
5. Ar parlou a ri ivez gand koad setim, ha gand aour e wiski anezo.
6. Lakaad a ri an aoter-ze rag-eneb d'ar ouel, pehini a zo a-ispill ouz an arh a desteni, dirag ar golher a holo an testeni, e peleh e komzin ouzit.
7. Hag Aaron a zevo warnezi beb mintin ezañs a hwez c'hwek. E lakaad a ray da zevi, pa aozo ar hleuzeuriou.
8. Ha pa o aozo war ar pardaez, e lakay c'hoaz ezañs da zevi dirag an Aotrou ; ar pez a vezo greet bepred en ho touez.
9. Ne ginnigot ket war an aoter-ze louzou c'hwez-vad kemmesket en eun doare all : na bleud-kinnig⁶¹, na loen-kinnig⁶², na braoued-kinnig⁶³.

⁶⁰ hin : eur muzul.

⁶¹ bleud-kinnig : poultrenn bet kinniget d'an Aotrou. "C'hwez-vad estren" hervez eun droidigez e galleg.

⁶² loen-kinnig : laza eul loen en enor d'an Aotrou.

⁶³ braoued-kinnig : eva en enor d'an Aotrou.

10. Aaron a bedo eur wech ar bloaz war gerniel an aoter, o skuilla warnezo ar gwad a vezo bet kinniget evid ar pehed ; eur gwalh a vezo greet a-vepred war an aoterze en ho touez. Sant ar Zent⁶⁴ a vezo d'an Aotrou.
11. Hag an Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
12. Pa gemeri an niver⁶⁵ euz bugale Izrael, pep hini a roy d'an Aotrou eur gouestl evid e ene, ha na gouezo ket a houli warnezo pa vezint bet niveret.
13. Kement hini a vezo bet niveret e ano, a roy eun hanter sikl hervez ment an templ. Ugent obolenn en-deus ar sikl. Eun hanter sikl a vezo kinniget d'an Aotrou.
14. Neb a vezo e ano en niverez, adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a roy eur gouestl.
15. An hini pinvidig ne roy ket ohpenn eun hanter sikl, hag an hini paour ne roy ket nebeutoh.
16. Pa'z-pezo dastumet an arhant a vezo bet roet gand bugale Izrael, e roy anezañ evid ezomm an tabernakl a desteni, evid ma vezo da eñvor anezo dirag an Aotrou, ha da ziskarg evid o eneou.
17. Hag an Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
18. Ober a ri ivez eur veol arem, gand he zroad, evid en em walhi ; hag he lakaad a ri etre tabernakl an testeni hag an aoter. Ha pa'z-pezo lakaet dour enni,
19. Aaron hag e vibien a walho ennañ o daouarn hag o zreid.
20. Pa vezo red dezo mond e-barz an tabernakl a desteni, ha pa vezo red dezo tostaad ouz an aoter, evid kinniga warnezi louzou c'hwez-vad d'an Aotrou ;
21. Gand aon na varvjent. Ar hemenn-mañ a vezo da viken da Aarom ha d'e ouenn en e houde.
22. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez,
23. O lavaroud : Kemer louzeier, pemp kant sikl euz ar mir⁶⁶ kenta hag ar gwella, hag eun hanter kemend-all a zinnamon⁶⁷, da lavaroud eo, daou-hant hanterkant sikl, hag ivez daou-hant hanterkant sikl a raoz-c'hwek⁶⁸.
24. Pemp-kant sikl a ganell, hervez pouez ar santuar, ha goñvor eun hin a eoul olived.
25. Gand kement-se e ri oleo zakr evid ar sakradur, eun trêd aozet hervez gouiziegez al louzaouer
26. Hag e sakri ganti tabernakl an testeni, hag arh ar gevredigez,
27. Hag an daol gand he listri, ar hantoler hag e oll listri, aoter al louzou c'hwez-vad,
28. Hag hini ar sakrifisou-losk, ha kement a zo red evid o lidou.
29. O zantella a ri oll, hag e vezint santel-braz : neb a stoko outo a vezo santellaet.
30. Sakri a ri Aaron hag e vibien, hag e santelli anezo evid ma vezint beleien din.
31. Lavaroud a ri ivez da vugale Izrael : An oleo zakr-mañ a vezo santellaet ha gouestlet din ganeoh ha gand ho kouenn en ho koude.
32. Ne vezo ket sakret kig an den ganatñ, ha ne reot ket eun all aozet eveltañ, o veza ma eo santellaet, ha ma vezo santel evidoh.
33. Piou bennag a aozo eun heveleb trêd, hag a roy euz anezañ da eun diavêziad, a vezo kaset kuit euz a-douez e bobl.

⁶⁴ Sant ar Zent : eun dra zantel-tre dirag an Aotrou.

⁶⁵ an niver : pa vo niveret, kontet, ganit niver bugale Izrael...

⁶⁶ mir : eur blantenn.

⁶⁷ zinnamon : eur blantenn.

⁶⁸ raoz-c'hwek : raoskl c'hwez-vad.

34. An Aotrou a lavaras c'hoaz da Voizez : Kemer louzou c'hwez-vad, stakte, hag oniks, ha galbanom c'hwez-vad, hag ezañs al lugernusa ; kement ha kement a bouez euz a bep hini :

35. Hag e ri eul louzou c'hwez-vad aozet hervez gouiziegez al louzaouer, mesket gand preder, ha glan, ha delliduz-braz da veza santellaet,

36. Ha pa'z-pezo o brevet oll evel poultr ar munuta, e liki euz an trêd dirag tabernakl an testeni, el leh ma en em ziskouezin dit. Al louzou-ze a vezo santel-braz evidoh.

37. Ne reot ket eun heveleb kemmesk evidoh hoh-unan ; rag gouestlet eo d'an Aotrou.

38. Piou bennag a ray eun heveleb trêd, evid kaoud ar c'hwez anezañ, a vezo kaset kuit euz a douez e bobl.

XXXI. Pennad.

Miridigez ar Sabat. An diou daolenn vên.

1. An Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
2. Setu em-eus galvet dre e ano Beseleel, mab Uri, mab Hur, euz a vreuriez Juda.
3. Hag em-eus e garget euz a spered Doue, a furnez, a boell, hag a ouiziegez e peb labour.
4. Evid ober kement ha heller da ober gand aour ha gand arhant, ha gand arem.
5. Ha gand marbr, ha gand mein talvouduz, ha gand koad a beb doare.
6. Roet em-eus dezañ da eil Ootiab, mab Akisamek, euz a vreuriez Dan : ha lakaet em-eus ar furnez e kalon ar re oll a zo gouiziegez, evid ma raint kement em-eus gourhemennet dit.
7. Tabernakl ar gevredigez, hag arh an testeni, hag ar golher a zo warnezañ, hag oll listri an tabernakl,
8. Hag an daol gand he listri, hag ar hantoler glan-braz gand e listri, hag aoter al louzou c'hwez-vad,
9. Hag aoter ar sakrifis-losk gand e oll listri, hag ar veol gand he zroad,
10. Ha dillad santel Aaron, ar beleg-braz, hag e vibien, evid m'o-devezo gwiskou sakr pa raint o harg,
11. Hag an oleo sakr, ha louzou c'hwez-vad ar santuar. Ober a raint kement em-eus gourhemennet dit.
12. Hag an Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
13. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Mirit gand evez va zabat ; rag an arouez eo etre me ha c'hwi, hag ho pugale en ho koude : evid ma ouiot penaoz eo me an Aotrou, a zantella ahanoh.
14. Mirit va zabat, rag santel eo deoh. Neb en-devezo e dorret, a vezo lakaet d'ar maro. Piou bennag a labouro en deiz-se, e vezo kaset kuit e ene euz a-douez e bobl.
15. E-pad c'hweh devez e labourot : ar seizved devez eo ar sabat, ehan gouestlet d'an Aotrou. Piou bennag a labouro en deiz-se a varvo.
16. Ra viro bugale Izrael ar sabat, ha ra lidint anezañ a oad da oad. Eur gevredigez da viken eo.

17. Etre me ha bugale Izrael, hag eun arouez a bado bepred ; rag e c’hweh devez en-deus an Aotrou greet an neñv hag an douar, ha d’ar seizved deiz en-deus ehanet da labourad.

18. An Aotrou goude beza komzet evel-se war menez Sinai, a roas da Voizez diou daolenn vein an testeni, skrivet gand biz Doue.

XXXII. Pennad.

Al leue aour. Moizez a dorr taolennou al lezenn.

1. Hogen ar bobl o weloud penaoz Moizez a zalee da ziskenn diwar ar menez, en em zavas a-eneb Aaron, hag a lavaras dezañ : Sao, gra deom doueed hag a gerzo en or raog ; rag Moizez, an den-se pehini en-deus on tennet euz a zouar an Ejipt, ne ouzom ket petra a zo c’hoarvezet gantañ.

2. Hag Aaron a lavaras dezo : Tennit al lagadennou-skouarn d’ho kwragez, d’ho mibien ha d’ho merhed, ha degasit o din.

3. Ar bobl a reas ar pez en-doa gourhemennet Aaron, hag a zegasas dezañ al lagadennou-skouarn.

4. Aaron o veza o hemeret, a lakaas o zeuzi, hag a reas ganto eul leue teuz ; hag i a lavaras : Setu da zoueed, Izrael, pere o-deus da zegaset euz a zouar an Ejipt.

5. Pa welas Aaron kement-se, e savas eun aoter dirazañ, hag e lakaas da embann, o lavaroud : Warhoaz ema lid an Aotrou.

6. Hag i o sevel dioh ar mintin, a ginnigas sakrifisou-losk, hag ostivou a beoh ; hag ar bobl a azezas evid debri hag evid eva, hag a zavas evid c’hoari.

7. Hogen an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud : Kee, diskenn, rag da bobl, pehini eh-eus tennet euz a zouar an Ejipt, he-deus pehet.

8. En em dennet o-deus buan euz an hent ez-poa diskouezet dezo : greet o-deus evito eul leue-teuz, e azeulet o-deus, hag o sakrifia ostivou dezañ, o-deus lavaret : Setu da zoueed, Izrael, pere o-deus da zegaset euz a zouar an Ejipt.

9. An Aotrou a lavaras c’hoaz da Voizez : Gweloud a ran penaoz ar bobl-se a zo kaled a benn.

10. Va lez da ober, evid ma savo va buanegez en o eneb, ha ma o gwastin ; ha me az lakay e penn eur bobl vraz all.

11. Hogen Moizez a bede an Aotrou e Zoue, o lavaroud : Perag, Aotrou, e sav droug ennout a-eneb da bobl, pehini eh-eus tennet euz a zouar an Ejipt gand eun nerz braz, hag eun dorn kreñv ?

12. Gra, me az ped, emezañ, na lavaro ket an Ejiptianed : O zennet en-deus gand ijin, evid o laza er meneziou, hag o gwasta diwar an douar ; ra habaskay da vuanegez, ha bez trugarezuz e-keñver fallagriez da bobl.

13. Az-pezh koun euz a Abraham, euz a Izaak, hag euz a Izrael da zervijerien, da bere eh-eus touet drezout da-unan, o lavaroud : Kreski a rin ho kouenn evel stered an neñv ; hag e roin d’ho pugale an oll zouar-mañ, a behini em-eus komzet ouzoh, hag ho-pezo anezañ da viken.

14. Neuze an Aotrou a habaskaas, ha ne fellas mui dezañ ober d’e bobl an droug en-doa lavaret e raje.

15. Ha Moizez a zistroas diwar ar menez, hag eñ o tougen en e zorn an diou daolenn a desteni, skrivet en daou du,

16. Greet gand labour Doue ; skrid a oa ivez kizellet gand Doue war an taolennou.

17. Hogen pa glevas Jozue an dispah hag ar savar euz ar bobl, e lavaras da Voizez : Trouz brezel a glever er hamp.
18. Ha Moizez a lavaras dezañ : N'eo ket aze garm tud en em argad d'an emgann, na mouez tud a laka o enebourien da dehi : hogen me a glev mouez kanerien.
19. Ha pa dotaas ouz ar hamp, e welas al leue hag an dañsou : hag o veza savet eun droug braz ennañ, e taolas an taolennou euz e zorn, hag e torras anezo ouz troad ar menez.
20. Hag o kemeroud al leue o-doa greet, e tevas anezañ hag hel lakaas e poultr a daolas en dour, hag a roas da eva da vugale Izrael.
21. Ha Moizez a lavaras da Aaron : Petra he-deus greet ar bobl-se dit, evid tenna warnezi eur pehed ker braz ?
22. Hag Aaron a lavaras : Na vezet ket droug ennout, va Aotrou ; rag te a anavez ar bobl-mañ, hag a oar penaoz eo douget d'an droug.
23. Lavaret o-deus din : Gra deom doueed hag a gerzo en or raoag : rag ar Moizez-se en-deus on tennet euz a zouar an Ejipt, ne ouzom ket petra a zo c'hoarvezet gantañ.
24. Ha me em-eus lavaret dezo : Piou ahanoh en-deus aour ? Hag i o-deus e zegaset hag e roet din ; e lakaet em-eus en tan, hag al leue-ze a zo deuet er-mêz.
25. Moizez eta o weloud penaoz ar bobl a oa chomet en noaz (rag Aaron en-doa o diwisket, evid an argazidigez louz-se, hag o lakaet en noaz e-mesk o enebourien).
26. A zavas e-tal dor ar hamp, hag a lavaras : Neb a zo a-du gand an Aotrou, en em unvanet ganen. Hag oll vibien Levi en em zastumas war e dro.
27. Hag eñ a lavaras dezo : Setu petra a lavar an Aotrou, Doue Izrael : Ra lakay peb den e gleze war e vorzed. It ha deuit euz an eil dor d'eben dre greiz ar hamp, ha lazet pep hini e vreur, e vignon, hag e amezeg.
28. Ha mibien Levi a reas evel m'en-doa lavaret Moizez ; hag e lazjont en deiz-se war-dro tri mil den warn-ugent.
29. Neuze Moizez a lavaras dezo : Gouestlet hoh-eus hirio ho taouarn d'an Aotrou, o laza ho mab, hag ho preur, evid ma vezo roet bennoz deoh.
30. Antronoz Moizez a lavaras d'ar bobl : Eur pehed braz-meurbed hoh-eus greet : pigna a rin etrezeg an Aotrou, evid gweloud ha me a hellin e neb doare e habaskaad en abeg d'ho kwall.
31. Hag o veza distroet etrezeg an Aotrou, e lavaras dezañ : Eur pehed braz-meurbed he-deus greet ar bobl-mañ, ha greet o-deus evito doueed aour : me az ped stard da zisteurel dezo ar pehed-se ;
32. Pe ma ne rez, da lemel ahanon diwar da levr eh-eus skrivet.
33. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Neb en-devezo pehet em eneb, hennez a lamin euz va levr.
34. Hogen te, kee ha kas ar bobl-se d'al leh em-eus lavaret dit : va êl a gerzo en da raog. E deiz ar veñjañs e welin hag e kastizin ar pehed-se o-deus greet.
35. An Aotrou a skoas eta war ar bobl, en abeg da wall al leue en-doa greet dezo Aaron.

XXXIII. Pennad.

An Izraelited a wel o gwall. Habaskaad a ra Doue.

1. Neuze an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud : Kerz, ha kee er-mêz euz ar vro-mañ, te hag ar bobl eh-eus tennet euz a vro an Ejipt, ha kee d'ar vro em-eus touet e rojen da Abraham, ha da Jakob, o lavaroud : D'az kouenn he roin.
2. Ha me a gaso eun êl en da raog, evid ma kasin kuit ar Hananead, an Amorread, an Hetead, ar Ferezead, an Hevead, hag ar Jebuzeal.
3. Ha ma'z i e-barz en eur vro e pehini e tiver al lêz hag ar mel. Rag ne bignin ket di ganez, dre ma'z out eur bobl kaled a benn, gand aon na zeujen d'az pevezi en hent.
4. Pa glevas ar bobl ar geriou rehuz-se, en em lakaas da ouela ; hag hini anezo ne wiskas e zaeou kaer dioh ar hiz.
5. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Lavar da vugale Izarel : Eur bobl kaled a benn out, eur wech e teuin en da greiz, hag az kasin da get. Hogen bremañ diwisk da zaeou kaer, evid ma ouezin petra a rin dit.
6. Bugale Izrael a guitaas eta o zaeou kaer e troad menez Horeb.
7. Moizez a gemeras ivez an tabernakl, hag e stignas anezañ pell dioh ar hamp, hag e halvas anezañ tabernakl ar gevredigez. Ha kement hini euz ar bobl en-doa eun diêz bennag, a yee er-mêz euz ar hamp da gavoud tabernakl ar gevredigez.
8. Pa'z ee Moizez er-mêz evid mond etrezeg an tabernakl, an oll bobl a zave, ha pep hini a chome en e zav e-tal e delt, hag e sellent ouz kein Moizez, beteg ma oa eet e-barz an tabernakl.
9. Pa oa eet Moizez e-barz an tabernakl a gevredigez, ar peul-koabr a ziskenne, hag a chome en e zav ouz an nor, hag an Aotrou a gomze ouz Moizez.
10. An oll bobl o weloud penaoz ar peul-koabr a chome ouz dor an tabernakl, a chome ivez o-unan ouz dor o zeltou, hag a azeule an Aotrou.
11. Hogen an Aotrou a gomze ouz Moizez dremm-oh-dremm, er hiz ma'z eo boazet eun den da gomz ouz e vignon ; ha pa zistroe-eñ d'ar hamp, Jozue, mab Nun, den yaouank e zervijer, ne zeue ket er-mêz euz an tabernakl.
12. Hogen Moizez a lavaras d'an Aotrou : Te a hourhemenn din kas ar bobl-mañ ha ne leverez ket din piou a dleez da gas ganen, petra bennag ma eh-eus lavaret din : Da anaoud a ran dre da ano, ha te eh-eus kavet trugarez dirazon.
13. Ma em-eus eta kavet trugarez dirazoud, diskouez din da zremm, evid ma anavezin ahanout, ha ma kavin trugarez dirag da zaoulagad : sell ouz ar vroad-mañ a zo da bobl.
14. Hag an Aotrou a lavaras : Va dremm a yelo en da raog, ha da lakaad a rin da ehana.
15. Ha Moizez a lavaras dezañ : Ma ne gerzez ket da-unan en or raog, na denn ket ahanom euz al leh-mañ
16. Rag penaoz e ouezim-ni, me ha da bobl, on-eus kavet trugarez dirazout, ma ne gerzez ket ganeom, evid ma vezim meulet gand an oll boblou a chom war an douar ?
17. Hogen an Aotrou a lavaras da Voizez : Ober a rin ar pez eh-eus lavaret : rag kavet eh-eus trugarez dirazon, ha da anaoud a ran dre da ano.
18. Ha Moizez a lavaras dezañ : Diskouez din da hloar.
19. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Me a ziskouezo dit an oll vadou, hag a halvo dirazout ano an Aotrou. Trugarez a rin da neb a fello din, hag habask e vezin e-keñver kement hini ha ma karin.
20. Doue a lavaras c'hoaz : Ne helli ket gweloud va dremm ; rag den ebed, hag eñ beo, ne welo ahanon.

21. Hag an Aotrou a lavaras c'hoaz : Setu ez eus eul leh ma'z on⁶⁹ ennañ, e pehini en em zalhi war ar mên :
22. Ha pa vezo tremenet va gloar, e likin ahanout e toull ar mên, hag e holoin ahanout gand va dorn, beteg ma vezin tremenet.
23. Ha me a denno va dorn, ha te a welo va hein, rag ne helli ket gweloud va dremm.

XXXIV. Pennad.

Nevezi a ra Doue e gevredigez.

1. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Gra dit diou daolenn vên evel ar re genta, ha me a skrivo warnezo ar geriou a oa war an taolennou eh-eus torret.
2. Bez dare adaleg ar mintin evid pignad raktal war menez Sinai, hag e chomi ganen war lein ar menez.
3. Na bignet den ganen, ha na vezet gwelet den war an oll venez : na beurent zoken a-zirag, nag an ejenned, nag an deñved.
4. Moizez a venas eta diou daolenn vên, e doare ar re genta : hag o sevel a-barz an deiz, e pignas war menez Sinai, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ, hag e touge an taolennou en e zorn.
5. Hag an Aotrou o veza diskennet en eur goabrenn, Moizez a chomas gantañ, hag a bedas ano an Aotrou.
6. Ha pa dremene an Aotrou e-biou dezañ, e lavaras : Roue, Aotrou Doue, trugarezuz ha kuñv, habask, leun a drugarez hag a wirionez ;
7. Pehini a vir an drugarez e mil nested : a zistaol ar fallagriez, hag ar gwallou, hag ar pehejou ; dirag pehini den n'eo dinamm anezañ e-unan ; pehini a zistaol fallagriez an tadou war ar vugale ha war bugale o bugale, beteg an drede hag ar bevare gouenn.
8. Kerkent Moizez a stouas beteg an douar, hag oh azeuli,
9. E lavaras : Ma em-eus kavet trugarez dirazout, O ! Aotrou, kerz ganeom, me az ped (rag ar bobl-mañ a zo kaled a benn) ; distaol or fallagriezou hag or pehejou, ha piaou ahanom.
10. Hag an Aotrou a lavaras : Ober a rin kevredigez dirag da oll bobl ; burzudou a rin ha n'int ket bet gwelet biskoaz war an douar, nag e broad ebed ; evid ma welo ar bobl-se e-kreiz pehini emhout, pegen euzuz eo al labour a dlean da ober, me an Aotrou.
11. Mir kement a hourhemennan hirio dit : ha me va-unan a lakay da dehed en da raog an Amorread, hag ar Hannaead, hag an Helead, hag ar Ferezead, hag an Hevead, hag ar Jebuzead.
12. Mir na ri biken kevregigez gand tud ar vro-ze ; rag evid da goll e ve.
13. Hogen diskar o aoteriou, torr o skeudennou, ha tro o hoajou sakr⁷⁰.
14. Na azeul⁷¹ ket a zoue a-ziavêz. An Aotrou a zo anvet an Doue oazuz ; oazig eo Doue.
15. Na ra ket⁷² a gevredigez gand tud ar broiou-ze, gand aon, goude m'o-devezo en em zaotret gand o doueed, ha m'o-devezo azeulet ar skeudennou, na zeuje unan bennag anezo d'az kervel evid da lakaad da zebri euz o loened lazet.

⁶⁹ ma'z on : m'emaon...

⁷⁰ o hoajou sakr : ? (o idolou sakr)

⁷¹ Na azeul ket : na azeulez ket...

16. Ne gemeri ket a wragez evid da vibien e-touez o merhed, gand aon, goude beza en em zaotret o-unan, na lakajent da vibien d'en em zaotra ivez gand o doueed.
17. Ne ri ket dit doueed teuz.
18. Goell ar bara dihoell a viri. E-pad seiz devez e tebri bara dihoell, e miz ar frouez nevez, evel ma em-eus gourhemennet dit ; rag e miz an nevez-amzer out deuet er-mêz euz an Ejipt.
19. Kement par a zigoro kov e vamm a vezo din. Ar re genta ganet euz an oll loened, ken euz an ejenned, ken euz an deñved, a vezo din.
20. Ar henta-ganet euz a eun azen a zaspreni gand eun oan ; hogen, ma n'her prenez ket, e lazi anezañ. Ar henta-ganet euz da vibien a zaspreni ; ha n'en em ziskouezi ket dirazon da zaouarn goulo.
21. E-pad c'hweh devez e labouri, hag ar seizved deiz eh ehani da arad ha da vedi.
22. Gouel ar sizuniou a lidi, o kinniga ar henta frouez euz a vederez da winiz, ha gouel diwez ar bloaz, pa vez dastumet an oll froueziou.
23. Teir gwech er bloaz da oll wazed en em ziskouezo dirag an Aotrou ollhalloudeg, Doue Izrael.
24. Rag p'am-bezo kaset kuit ar broadou euz a zirazout, ha pa'm-bezo astennet da harzou, nep hini ne aozo spiou ouz da vro, mar pignez ha ma en em ziskouezez teir gwech er bloaz dirag an Aotrou da Zoue.
25. Ne ginnigi ket gand goell gwad al loen a lazi em enor ; ha ne chomo netra euz a loen gouel Pask beteg ar mintin.
26. Kenta frouez da zouar a ginnigi e ti an Aotrou da Zoue. Ne boazi ket ar menn-gavr a zen e vamm.
27. An Aotrou a lavaras c'hoaz da Voizez : Skriv evidout ar geriou-mañ, dre bere em-eus greet kevredigez ganez ha gand Izrael.
28. Chom a reas eta eno gand an Aotrou daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez : ne zebras ket a vara, ha ne evas ket a zour ; hag eñ a skrivas war an taolennou an deg ger a gevredigez.
29. Ha pa ziskenne Moizez diwar menez Sinai, e touge an diou daolenn a desteni, ha ne ouie ket e strinke lugern diwar e dal war taolennou an deg ger diwar e dal, goude beza bet o komz gand an Aotrou.
30. Hogen pa welas Aaron ha bugale Izrael e lugerne tal Moizez, o-doe aon o tostaad outañ.
31. Hag eñ o veza o galvet, Aaron ha pennou ar sinagog a zistroas d'e gavoud. Ha pa en-doe komzet outo,
32. Oll vugale Izrael a zeuas ivez etrezeg ennañ ; hag eñ a hourhemennas dezo kement en-doa klevet gand an Aotrou war menez Sinai.
33. Ha pa en-doe peurgomzet outo, e lakaas eur ouel war e benn.
34. Pa'z ee Moizez en tabernakl, ha pa gomze gand an Aotrou, e tenne ar ouel beteg ma teue er-mêz ; ha neuze e lavare da vugale Izrael kement a oa bet gourhemennet dezañ.
35. Ar re-mañ a wele ar skedou war benn Moizez pa zeue er-mêz euz an tabernakl ; hogen eñ a holoe adarre e benn, pa gomze outo.

XXXV. Pennad

Kemennou Doue. Roou an Izraelited.

⁷² Na ra ket : Na rez ket...

1. Moizez eta o veza dastumet oll vugale Izrael, a lavaras dezo : Setu an traou en-deus gourhemennet an Aotrou da ober.
2. E-pad c’hweh devez e labourot : ar seizved deiz a vezo santel evidoh, o veza ma eo ar sabbat hag ehan an Aotrou. Neb a ray labour en deiz-se, a vezo lazec.
3. Ne hwezot ket a dan en hoh oll diez e deiz ar sabbat.
4. Moizez a lavaras c’hoaz da vagad oll vugale Izrael : Setu ar pezh a hourhemenn an Aotrou, o lavaroud :
5. Likit a-du en ho tiez roou kenta evid an Aotrou : kement hini o hinnigo a galon vad hag a youl frank : aour, hag arhant, hag arem.
6. Ha mezer glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, ha lien moan, ha bleo gevr,
7. Ha krehin maout livet e ruz, ha krehin glaz-ruz, ha koad setim ;
8. Hag evid aoza ar hleuzeuriou, hag evid ober trêdou, hag a beb louzou c’hwez-vad :
9. Mein oniks, ha mein talvouduz-braz evid kinkla an efod hag ar rational.
10. Kement hini ahanoh a zo gouizieg, deuet, ha gret ar pezh en-deus gourhemennet an Aotrou :
11. Da lavaroud eo, an tabernakl, gand e doenn hag e holher, e lagadennoù, e elfennoù, e sparlou, e beulioù, hag e skeudennoù ;
12. An arh gand e sparlou, hag he golher, hag ar ouel a vezo a-ispill dirazi ;
13. An daol gand he sparlou, hag he listri, hag ar baraou a ginnig ;
14. Ar hantoler evid dougen ar goulaouennoù, e listri hag e gleuzeuriou, hag an eoul evid enaoui an tan ;
15. Aoter louzou c’hwez-vad, hag he sparlou, hag oleo ar sakradur, hag al louzou c’hwez-vad : hag an telt e-tal dor an tabernakl ;
16. Aoter ar sakrifis-losk, hag he gael arem, he sparlou hag he listri, ar veol hag he zroad ;
17. Gouelioù al leur, gand ar peulioù hag o skeudennoù, hag an telt e dor ar porz ;
18. Ha peulioùigoù an tabernakl hag euz al leur, gand o herdinigoù ;
19. Ar gwiskou a lakaer e lid ar santuar, gwiskou Aaron ar beleg braz hag e vibien, evid ma raint ar garg a veleien din.
20. Pa oa eet kuit an oll strollad euz a vugale Izrael a-zirag Moizez,
21. E kinnigont d’an Aotrou, a galon vad hag a youl frank, o roou kenta, evid al labour a oa da ober d’an tabernakl a desteni ; hag evid kement a oa red evid al lid hag ar gwiskou santel ;
22. Ar wazed gand ar merhed a roas o lagadennoù breh, hag o lagadennoù skouarn, hag o bizou, hag o helhennou : an oll listri aour a oe lakaet a-du evid beza kinniget d’an Aotrou.
23. Neb en-doa mezer glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, ha lien moan, ha bleo gevr, ha krehin maout livet e ruz, ha krehin glaz-ruz,
24. Hag arhant, hag arem, a ginnigas anezo d’an Aotrou, gand koad setim evid ober meur a dra.
25. Ar merhed gouizieg a roas ivez mezer glaz, ha limestran ha tane, ha lien moan ;
26. Ha bleo gevr o-doa nezet o-unan ; hag e rojont oll a galon vad.
27. Hogen priñsed ar bobl a ginnigas mein oniks, ha mein talvouduz-braz evid an efod hag ar rational ;

28. Ha louzou c’hwez-vad, hag eoul evid ar hleuzeuriou, hag evid ober trêdou, hag a beb louzou c’hwez-vad.

29. An oll wazed hag an oll verhed a reas o roou a galon vad, evid ober al labouriou en-doa gourhemennet an Aotrou dre henou Moizez. Hag oll vugale Izrael a ouestlas kement-se d’an Aotrou a youl frank.

30. Neuze Moizez a lavaras da vugale Izrael : Setu en-deus an Aotrou galvet dre e ano Beseleel, mab Uri, mab Hur euz a vreuriezh Juda.

31. Hag e garget en-deus euz a spered Doue, a furnez, a boell, a ouiziegezh hag a bep kelenn,

32. Evid kavoud hag evid ober peb labour gand aour, gand arhant, gand arem ;

33. Evid kizella ar vein, hag evid kilvizia : kement a hell beza greet er hovel,

34. En-deus lakaet en e spered ; hag e spered Ooliab, mab Akisamek euz a vreuriezh Dan.

35. Ha leuniet en-deus a furnez, evid ober labour ar halvez, ar gwiader, ar broder, gand mezer glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, ha lien moan : m’o gweint oll, ha ma raint traou nevez.

XXXVI. Pennad.

Largetez re vraz an Izraelited. An tabernakl.

1. Beseleel eta, hag Ooliab, ha kement den gouiziezh da behini en-doa roet an Aotrou ar furnez hag ar poell evid ober al labouriou a oa red, hag a oa gourhemennet gand Aotrou evid ar santuar, en em lakaas da labourad.

2. Ha pa en-doe Moizez o galvet, ha kement den gouiziezh da bere en-doa an Aotrou roet ar furnez, hag ar re a oa en em ginniget o-unan evid ober al labour,

3. E roas dezo oll roou bugale Izrael. Ha pa’z ee ar re-mañ en o labour, ar bobl a ginnige beb mintin reou all.

4. Rag-se al labourerien a zeuas ;

5. Hag a lavaras da Voizez : Mui e kinnig ar bobl eged n’eo red.

6. Moizez a hourhemennas eta ma vije disklêriet gand mouez an embanner, na vije kinniget mui netra na gand gwaz, na gand maouez, evid ober ar santuar. Evel-se e oe ehanet kinniga roou,

7. O veza ma ma oa bet kinniget a-walh, ha dreist-red zoken.

8. Ar re oll a oa leun o halon a furnez evid ober labour an tabernakl, a reas eta deg gouel lien moan troet, a liou glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, gand meur a labour a vroderez.

9. Pep hini anezo en-doa eiz ilinad warn-ugent a hed, ha pevar ilinad a led ; hag an oll oueliou a oa euz an heveleb ment.

10. Hag eñ a stagas pemp gouel an eil ouz eben, hag ar pemp all ivez an eil ouz eben.

11. Ober a reas ivez liammou a liou glaz ouz bevonn unan euz ar goueliou a bep tu, hag e bevonn ar ouel all en heveleb doare ;

12. Evid am en em gavje al liammou an eil dirag egile, ha ma ve staget ar goueliou kevred.

13. Rag-se e teuzas ivez hanter-kant lagadenn aour, e pere ez aje liammou ar goueliou, ha na rajent nemed eun tabernakl.

14. Ober a reas ivez unneg pallenn bleo gevr evid golei an tabernakl.

15. An hed euz ar pallenn a oa euz a dregont ilinad, hag al led euz a bevar ilinad : euz a eur vent e oa an oll ballennou.

16. Pemp anezo a stagas an eil ouz egile, hag ar c’hweh all a stagas ivez war eun tu.
17. Ober a reas ivez hanter-kant liamm ouz bevenn unan euz ar pallennou, hag hanter-kant ouz bevenn egile, evid o staga kevred.
18. Ober a reas c’hoaz hanter-kant lagadenn arem, evid o staga ouz an doenn, hag evid ober euz an oll ballennou eur pallenn hepken.
19. Ober a reas ivez eur golo evid an tabernakl gand krehin maout livet e ruz, ha war horre, eur golo all a grehin livet e glaz-ruz.
20. Ober a reas ivez elfennou koad setim, evid lakaad en o zav ouz an tabernakl.
21. Pep hini euz an elfennou he-doa deg ilinad a hed, hag eun ilinad hanter a led.
22. E peb elfenn e oe greet diou haran, evid o framma an eil gand eben. Hag an oll elfennou a oe reizet evel-se.
23. Ugent a oa anezo en tu a zelle ouz ar hreisteiz,
24. Gand daou-ugent steudenn arhant. Peb elfenn a oa douget war diou steudenn, a bep tu euz ar horniou, el leh ma en em gav an diou haran.
25. Ugent elfenn a reas ivez evid an tu euz an tabernakl a zelle ouz an hanternoz.
26. Gand daou-ugent steudenn arhant, diou steudenn dre beb elfenn.
27. Hogen war-zu ar huz-heol, da lavaroud eo war-zu an tabernakl a zelle ouz ar mor, e reas c’hweh elfenn,
28. Ha diou all e korniou a-dreñv an tabernakl.
29. Hag i a oe frammet adaleg ar sol beteg al lein, ha gand eun heveleb framm e oent dalhet. Evel-se e reas en daou du euz ar horniou ;
30. Evid ma vije seiz elfenn en oll, ha c’hwezeg steudenn arhant, diou steudenn evid eun elfenn.
31. Ober a reas ivez sparlou gand koad setim, pemp evid derhel an elfennou en eur hostez euz an tabernakl.
32. Ha pemp all evid derhel an elfennou euz an tu all : hag ohpenn, pemp all c’hoaz evid tu ar huz-heol euz an tabernakl a zelle ouz ar mor.
33. Ober a reas ivez eur sparl all, a yee a-dreuz d’an oll elfennou, euz a eur penn d’egile.
34. Gand aour e holoas an elfennou, dindan o steudennou arhant teuzet, ha lagadennou aour a reas, evid derhel ar sparlou ganto ; ar re-mañ a holoas ivez gand taolennou aour.
35. Ober a reas ivez eur ouel a liou glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, greet gand lien moan troet, war behini e oe greet labour broderez, e meur a zoare.
36. Ober a reas pevar beul koad setim, a holoas a aour gand o fennou, dindan o steudennou arhant teuzet.
37. Ober a reas ivez eun telt dirag dor an tabernakl, hag an telt a oa a liou glaz, ha limestra, ha tane, ha lien moan troet, ha goloet a vroderez.
38. Ha pemp peul gand o fennou, a holoas a aour : hag o steudennou a oe greet gand arem teuzet.

XXXVII. Pennad

An arh. An daol. Ar hanteler aour. Aoter al louzou c’hweh-vad.

1. Beseleel a reas ivez an arh gand koad setim, pehini he-doa daou hanter ilinad a hed, eun ilinad hanter a led, hag eun ilinad hanter a uhelled : he golei a reas gand aour ar glanna en diabarz hag en diavêz :
2. Hag eñ a reas war he gorre eur gurunenn aour, a yee tro-war-dro.
3. Lakaad a reas peder lagadenn aour teuzet e pevar horn an arh, diou lagadenn en eun tu, ha diou en tu all.
4. Sparlou a reas ivez gand koad setim, hag o goloas gand aour ;
5. Hag o lakaad a reas el lagadennou a oa e korniou an arh evid he dougen.
6. Ober a reas ivez ar golher, da lavaroud eo an orakl gand aour ar glanna, pehini en-doa daou ilinad hanter a hed, hag eun ilinad hanter a led :
7. Hag ivez daou cherubin aour greet gand ar morzol, a lakaas en daou benn euz ar golher :
8. Eur cherubin e penn eun tu, hag eur cherubin all e penn an tu all : daou cherubin, unan e pep penn euz ar golher.
9. Astenn a reent o eskell, hag e holoent ar golher, hag i a zelle an eil oh egile, hag ouz ar golher.
10. Ober a reas ivez eun daol gand koad setim, pehini he-doa daou ilinad a hed, eun ilinad a led, hag eun ilinad hanter a uhelled.
11. Gand aour ar glanna he goloas, hag eur vevenn aour a reas tro-war-dro.
12. War ar vevenn e lakaas eur gurunenn aour kompez a bevar biz a uhelled, ha war houmañ eur gurunenn all.
13. Teuzi a reas ivez peder lagadenn aour, a lakaas e pevar horn an daol, unan war bep troad,
14. Dindan eur gurunenn : hag e lakaas sparlou enno evid ma vije gellet dougen an daol.
15. Gand koad setim e reas ivez ar sparlou, hag o goloas gand aour.
16. Ober a reas ivez gand aour glan, evid oll ezommou an daol-ze, pladou, kopou, tasou, hag ezañsouerou, e pere e tleer kinniga ar skuilladegou⁷³.
17. Ober a reas ivez gand aour ar glanna ha gand ar morzol eur hanteler. Hag euz e walenn e teue barrou, kopou, bolodou ha lili :
18. C’hweh barr a bep tu, tri barr en eun tu, ha tri barr a eun tu all.
19. Tri hop e doare kraoñ a oe greet ouz eur barr, hag eur bolod hag eul lilienn. Henez e oa labour ar c’hweh barr a zave euz a walenn ar hantoler.
20. En e walenn e oa pevar hop e doare kraoñ, hag eur bolod hag eul lilienn dre bep hini.
21. Bolodou a oa e tri leh euz an daou varr, pere a ra c’hweh en oll, a zave euz an heveleb gwalenn.
22. Ar bolodou eta hag ar barrou a oa euz anezañ ; oll e oant greet gand ar morzol hag euz a aour ar glanna.
23. Ober a reas ivez gand aour ar glanna seiz kleuzeur, gand o gevellou, hag al listri evid moug ar poulhennou.
24. Ar hantoler gand e oll listri a boueze eun talant aour.
25. Ober a reas ivez gand koad setim aoter al louzou c’hwez-vad, pehini he-doa eun ilinad a hed hag a led, hag a oa pevar horneg, ha daou ilinad a uhelder : ha kerniel a zave euz he horniou.
26. He holei a reas gand aour ar glanna, gand he gael, hag he speuriou, hag he gerniel.

⁷³ skuilladegou : evadegou relijiel.

27. Ober a reas eur gurunenn aour tro-war-dro, ha diou lagadenn aour a bep tu dindan ar gurunenn, evid lakaad sparlou enno, da zougen an aoter.
28. Ar sparlou a reas gand koad setim, hag o goloas gand taolennou aour.
29. Ober a reas ivez oleo evid trêd ar sakrerez, hag eul louzou c’hwez-vad, hervez gouiziegez al louzaouer.

XXXVIII. Pennad.

Aoter ar sakrifisou-losk. Leur an tabernakl.

1. Ober a reas ivez gand koad setim aoter ar sakrifisou losk, pehini he-doa pemp ilinad a hed hag a led, hag a oa pevar-horneg ; ha tri ilinad a uhelder.
2. Pevar horn a zave euz a bevar hogn an aoter ; hag eñ he goloas gand arem.
3. Hag eñ a reas gand arem meur a lestr evid ezommou an aoter, pezelioù, gultaniou, bahiou, ha pezelioù-tan.
4. Ober a reas ivez eur gael arem e doare eur roued, ha dindanni eun oaled e-kreiz an aoter.
5. Teuzi a reas peder lagadenn a lakaas e pevar hogn ar gael, evid lakaad ar sparlou a dlee dougen an aoter.
6. Gand koad setim e reas ar sparlou-ze, hag o goloas gand taolennou arem.
7. Hag eñ a lakaas ar re-mañ el lagadennou a zave en daou euz an aoter. Hogen an aoter ne oa ket fetiz ; gand elfennoù e oa greet, goullo ha kleuz en diabarz.
8. Ober a reas ivez eur veol arem gand he zroad, gand melezourioù ar merhed, pere a veze ouz dor an tabernakl.
9. Ober a reas ivez leur an tabernakl : e tu ar hreisteiz e oa teltou lien moan troet, war kant ilinad a hed.
10. Bez’ ez oa ugent peul arem gand o steudennou : hag o fennou gand o hizelladurioù a oa a arhant.
11. Bez’ ez oa ivez war-zu an hanternoz teltou, peulioù, gand o steudennou hag o fennou euz an heveleb ment, hag euz an heveleb metal.
12. Hogen war-zu al leur a zelle ouz ar huz-heol, ez oa teltou a hanter-kant ilinad, ha deg peul arem gand o steudennou, ha pennou ar peulioù, gand o oll gizelladurioù a arhant.
13. War-zu ar zav-heol, e lakaas teltou a hanter-kant ilinad.
14. A bere ez oa pemzeg ilinad war eun tu, gand tri beul hag o steudennou.
15. Hag ivez pemzeg ilinad war an tu all, gand tri beul hag o steudennou : rag en o hreiz e reas dor an tabernakl.
16. Oll deltou al leur a oa greet gand lien moan troet.
17. Steudennou ar peulioù a oa a arem, hag o fennou gand o oll gizelladurezioù a oa a arhant : ha peulioù al leur o-unan a wiskas gand taolennou arhant.
18. E porz al leur e reas eun telt goloet a vroderez, a liou glaz, ha limestra, ha tane, ha greet gand lien moan troet, pehini en-doa ugent ilinad a hed, ha pemp ilinad a uhelder, hervez ar vent euz an oll deltou euz al leur.
19. Pevar beul a oa e dor an tabernakl, gand o steudennou a arem ; hag o fennou, gand o hizelladurioù a oa a arhant.
20. Peulioù arem a reas ivez evid lakaad tro-war-dro d’an tabernakl ha d’al leur :
21. Setu binvioù tabernakl an testeni, diou ma int niveret hervez gourhemennou Moizez e lidou al Levited dre zorn Itamar, mab Aaron, ar beleg-braz.

22. Beseleed, mab Uri, a oa mab Hur euz a vreuriez Juda, a beureas al labour, hervez ar gourhemenn en-doa roet an Aotrou dre henou Moizez.

23. Da eil en-doe Ooliab, mab Akisamek, euz a vreuriez Dan, pehini a ouie ivez labourad ervad e koad, e neud a beb liou, e broderez a liou glaz, a limestra, a dane, hag a lien moan.

24. An oll aour a oe dispignet evid labour ar santuar, hag a oe kinniget e roou da Zoue, a oe euz a nao dalant warn-ugent, hag euz a seiz-kant sikl ha tregont, hervez ment ar santuar.

25. Ar roou-mañ a oe greet gand ar re en em gavas en nivererez, adaleg ugent vloaz hag ohpenn, ha pere en em gavas euz a hweh-kant tri mil pemp-kant hag hanter-kant den, pere a zouge an armou.

26. Bez' e oe ohpenn kant talant arhant, gand pere e oe greet steudennou ar santuar, hag ar porz e pehini edo ar ouel a-ispill.

27. Kant steudenn a gant talant a reas ; euz a eun talant e oa pep steudenn.

28. Mil c'hweh-kant pemzeg ha tri-ugent sikl arhant a lakaas ouz pennou ar peuliu, hag e holoas anezo gand taolennou arhant.

29. Kinniget e oe ivez deg talant ha tri-ugent a arem ha daou vil pevar-hant sikl ;

30. Gand pere e oe greet ar steudennou e dor tabernakl an testeni, hag an aoter arem, gand e gael, hag an oll listri a oa red eviti ?

31. Ha steudennou al leur, ken e-tal an nor, ha peuliu an tabernakl hag al leur tro-war-dro.

XXXIX. Pennad.

Gwiskamañchou ar beleg-braz, hag ar veleien all.

1. Hogen Beseleel a reas gand liou glaz, gand limestra, gand tane, ha gand lien moan, gwiskamañchou Aaron, pa ree e garg santel, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.

2. Ober a reas eta an efod gand aour, ha mezer glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, ha lien moan troet :

3. Brodet oll e oa. Troha a reas folennou aour tano, hag e reas neudennou anezo, evid o gwea gand an neudennou all a beb liou.

4. An daou du euz an efod en em unane war bevonn ar penn uhella ;

5. Hag ar gouriz a reas gand an heveleb liou, evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet da Voizez.

6. Aoza a reas ivez daou vên oniks a frammas en aour, ha war bere e kizellas, gand labour ar meiner, anoioù bugale Izrael.

7. O lakaad a reas en daou du euz an efod, e koun euz a vugale Izrael, evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet da Voizez.

8. Ober a reas ivez ar rational gand labour ar vroderez, gweet evel an efod gand aour, ha mezer glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, ha lien moan troet.

9. Pevar-horneg ha daou bleget e oa ; eur rahouenn en-doa a hed hag a led.

10. Lakaad a reas ennañ peder reñkad vein ; er reñkad genta, ez oa ar sardon, hag an topaz⁷⁴, hag an emerodenn⁷⁵ :

11. En eil reñkad, ar harboukl⁷⁶, hag ar safir⁷⁷, hag ar jasp⁷⁸.

⁷⁴ topaz : deuz ar galleg.

⁷⁵ emerodenn : deuz ar galleg.

⁷⁶ harboukl : galleg : escarboucle.

12. En drede reñkad al ligur⁷⁹, hag an agatenn⁸⁰, hag an ametist⁸¹ :
13. Er bevare reñkad, ar hrozolit⁸², hag an oniks, hag ar beril⁸³. Strobet ha frammet e oent en aour hervez o reiz.
14. Anoiou daouzeg breuriez Izrael a oa kizellet war an daouzeg mên-ze ; eun ano war beb mên.
15. Ober a rejont er rational chadennou euz an aour ar glanna, a bere al lagadennou a yee an eil en eben ;
16. Ha diou vahig⁸⁴, ha diou lagadenn aour. Al lagadennou a lakajont en daou du euz ar rational.
17. A bere e teue a-ispill diou chadenn aour, pere a lakajont er bahiougou⁸⁵ a oa e korniou an efod.
18. Ar re-mañ en em gave ker reiz a-raog hag a-dreñv, ma en em gave frammet an efod hag ar rational en eil gand egile ;
19. Ha ma oant stardet gand ar gouriz, ha liammet striz gand al lagadennou, a oa unvanet gand eur ruban glaz, evid na vijent ket laosk, ha na helljent ket pellaad an eil diou egile, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.
20. Ober a rejont ivez sae an efod, oll a liou glaz.
21. Bez' e oa eun toull er penn uhella anezi hag en he hreiz, hag eur gourem war-dro an toull.
22. Hag er penn izella, e lost ar zae, ez oa grenadou a liou glaz, ha limestra, ha tane, ha lien moan troet :
23. Ha kleierigou aour ar glanna, a veskjont gand ar grenadou e lost ar zae tro-war-dro.
24. Bez' e oa eta mesket eur hlohig aour hag eur grenad, hag ar beleg-braz a oa kinklet evel-se pa ree e garg, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.
25. Ober a rejont ivez saeou striz lien moan gweet evid Aaron hag e vibien ;
26. Ha mitrou lien moan gand o hurunennouigou ;
27. Ha bragou lien moan lin ;
28. Gand eur gouriz lien moan troet, a liou glaz, ha limestra, ha tane diou wech livet, hag eñ brodet, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.
29. Ober a rejont ivez gand aour ar glanna an daolenn zakr hag enoruz, hag e skrivjont warnezi gand labour ar hizeller : AR ZANTELEZ D'AN AOTROU.
30. Hag e stagjont anezi ouz ar mitr gand eul liammig glaz, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.
31. Evel-se e oe peurhreet labour an tabernakl, ha telt an testeni. Bugale Izrael a reas kement en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.
32. Hag i a ginnigas an tabernakl, hag e holher, hag e oll vinviou, al lagadennou, an elfennou, ar parlou, ar peulio hag ar steudennou ;
33. Hag ar golo krehin maout livet e ruz, hag ar golo all livet e glaz-ruz.
34. Ar ouel, an arh, ar parlou, ar golher ;
35. An daol gand he listri, ha gand baraou ar hinnig ;
36. Ar hantoler, ar hleuzeuriou, hag o listri gand an eoul ;

⁷⁷ safir : deuz ar galleg.

⁷⁸ jasp : deuz ar galleg.

⁷⁹ ligur : opalenn.

⁸⁰ agatenn : deuz ar galleg.

⁸¹ ametist : deuz ar galleg.

⁸² hrozolit : euz ar galleg.

⁸³ beril : euz ar galleg.

⁸⁴ vahig : bazig (?)

⁸⁵ bahiougou : baziouigou (?)

37. An aoter aour, hag an trêd, hag al louzou c’hwez-vad ;
38. Hag an telt e dor an tabernakl ;
39. Hag an aoter arem, gand he gael, he sparlou, hag he oll listri : ar veol gand he zroad ; goueliou al leur, hag ar peuliu gand o steudennou ;
40. Hag an telt e dor al leur, gand e liammou hag e beuliu. Ne ziueras netra euz ar pez a oa gourhemennet da ober evid servij an tabernakl ha telt ar gevredigez :
41. Hag ar gwiskamañchou ivez a lakae ar veleien er santuar, da lavaroud eo Aaron hag e vibien,
42. A ginnigas bugale Izrael, evel m’en-doa gourhemennet an Aotrou.
43. Pa welas Moizez penaoz e oa peurhreet an traou-ze oll, e vennigas anezo.

XL. Pennad.

Sakradurez an Tabernakl.

1. Goude-ze an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
2. Er miz kenta, d’an deiz kenta euz ar miz, e savi tabernakl an testeni.
3. Lakaad a ri ennañ an arh, hag e liki ar ouel a-ispill dirazi.
4. Dougen a ri an daol, hag e liki warnezi, dioh reiz, an traou a zo bet gourhemennet. Lakaad a ri ar hantoler gand e gleuzeuriou.
5. Hag an aoter aour war pehini e tever an ezañs, dirag arh an testeni. Lakaad a ri an telt e dor an tabernakl.
6. Ha dirazañ aoter ar sakrifisou-losk ;
7. Etre an aoter hag an tabernakl, ar veol a vezo leun a zour.
8. Lakaad a ri teltou tro-war-dro d’al leur ha d’he dor.
9. Hag o kemeroud eoul ar sakradur, e sakri an tabernakl gand e listri, evid ma vezint santellaet.
10. Aoter ar sakrifisou-losk, hag heh oll listri ;
11. Ar veol gand he zroad ; oll e sakri anezo gand oleo ar sakradur, evid ma vezint santel-braz.
12. Kas a ri Aaron hag e vibien ouz dor tabernakl an testeni, hag o veza o gwalhet gand dour,
13. E wiski anezo gand gwiskamañchou santel, evid ma servijint ahanon, ha ma tremeno o zakradur en eur velegiez peurbaduz.
14. Ha Moizez a reas kement en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ.
15. Evel-se er miz kenta euz an eil bloaz, d’an deiz kenta euz ar miz, e oe savet an tabernakl.
16. Moizez o veza e zavet, a lakaas an elfennou, hag ar steudennou, hag ar sparlou, hag a zavas ar peuliu.
17. Hag eh astennas an doenn war an tabernakl, goude beza lakaet eur golo warnezañ, evel m’en-doa gourhemennet an Aotrou.
18. Lakaad a reas an testeni en arh, goude beza lakaet ar sparlou dindan, hag an orakl war horre.
19. Ha goude m’en-doe douget an arh en tabernakl, e lakaas ar ouel a-ispill dezi, evid seveni gourhemenn an Aotrou.
20. Lakaad a reas ivez an daol e tabernakl an testeni war-zu an hanternoz, er-mêz euz ar ouel.
21. Hag e reizas dirag an Aotrou baraou ar hinnig, evel m’en-doa an Aotrou gourhemennet da Voizez.

22. Lakaad a reas ivez ar hantoler e tabernakl an testeni dirag an daol, war-zu ar hreisteiz.
23. Goude beza lakaet ar hleuzeuriou hervez o reiz, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou.
24. Lakaad a reas ivez an aoter aour e tabernakl an testeni dirag ar ouel.
25. Hag e tevas warnezi ezañs louzou c'hwez-vad, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ.
26. Lakaad a reas ivez an telt e dor tabernakl an testeni.
27. Hag aoter ar sakrifisou-losk e dor tabernakl an testeni, war behini e kinnigas ar sakrifisou-losk, hag ar sakrifisou all, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou.
28. Lakaad a reas ivez ar veol etre tabernakl an testeni hag an aoter, hag e kargas anezi gand dour.
29. Ha Moizez, hag Aaron, hag e vibien, a walhas enni o daouarn hag o zreid,
30. A-barz ma'z ejont e tabernakl ar gevredigez, ha ma tostajont ouz an aoter, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.
31. Sevel a reas ivez al leur war-dro d'an tabernakl ha d'an aoter, hag e lakaas eun telt ouz an nor. Goude ma oe peurhreet oll,
32. Eur goabrenn a holoas tabernakl an testeni ; ha gloar an Aotrou a gargas anezañ.
33. Ha Moizez ne helle ket mond e-barz tabernakl ar gevredigez, o veza m'e holoe oll ar goabrenn, ha ma luhe meurdez an Aotrou ennañ, dre ma oa goloet oll gand ar goabrenn.
34. Pa'z ee kuit ar goabrenn diwar an tabernakl, bugale Izrael a yee kuit a-vandennou.
35. Ma en em zalhe ar goabrenn a-zioh, i a chome war al leh.
36. Rag koabrenn an Aotrou en em astenne war an tabernakl en deiz, ha tan en noz, hag oll boblou Izrael he gwele euz o oll ziez.

Al levitik

I. Pennad.

Lezennou ar sakrifisou-losk, evid an ejenned, evid an deñved hag ar gevr ; evid an evned.

1. Hogen an Aotrou a halvas Moizez euz an tabernakl a desteni, o lavaroud :
2. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Pa ginnigo eur re⁸⁶ ahanoh d'an Aotrou eun ostiv loened, da lavaroud eo ejenned pe deñved a lazo ;
3. Mar deo e ginnig eur sakrifis-losk, ha mar deo eun ejenn, e kinnigo eur par dinamm ouz dor tabernakl an testeni, evid lakaad an Aotrou da veza trugarezuz en e geñver.
4. Lakaad a ray e zorn war penn an ostiv, pehini a vezo degemeret, hag a vezo da ziskarg dezañ.
5. Hag eñ a lazo al leue dirag an Aotrou, hag ar veleien, mibien Aaron, a ginnigo e wad, o skuilla anezañ war-dro d'an aoter a zo e-tal dor an tabernakl.
6. Goude beza diskrohennet an ostiv, e trohint e izili a-dammou.
7. Hag i a lakay an tan dindan an aoter, goude beza a-raog aozet ar heuneud.
8. Lakaad a raint war-horre an izili a vezo bet trohet, da lavaroud eo ar penn, ha kement a zalh ouz an avu,
9. Goude beza gwalhet gand dour ar bouzellou hag an treid : hag ar beleg o devo war an aoter, evel eur sakrifis-losk hetuz d'an Aotrou gand e hwez.
10. Mar kinnig eul loen all, da lavaroud eo eun dañvad pe eur havr, e kinnigo eur par dinamm :
11. Hag e lazo anezañ dirag an Aotrou, e tu an aoter a zell ouz an hanternoz : ha mibien Aaron a skuillo o gwad tro-war-dro d'an aoter.
12. Hag i a droho o izili, o fenn, ha kement a zalh ouz an avu : hag e lakaint anezo war ar heuneud, dindan pehini e lakaint an tan.
13. Gwalhi a raint ar bouzellou hag an treid gand dour. Hag ar beleg a zevo war an aoter an oll draou kemennet, evel eur sakrifis-losk, hag eun dra a hwez-vad d'an Aotrou.
14. Hogen mar bez kinniget d'an Aotrou eur sakrifis-losk gand evned, gand turzunelled, pe gand koulmedigou,
15. Ar beleg a ginnigo anezañ war an aoter, hag o veza troet e benn ouz ar gouzoug, e ray eur gouli dezañ, hag e lakay ar gwad da redeg ouz bevonn an aoter.
16. Teurel a ray an elaz hag ar pluñv e-kichenn an aoter, war-zu ar zav-heol, el leh e pehini e taoler peurvuia al ludu.
17. Terri a ray e ziouskell heb o zroha, hag heb o ranna gand houarn ; hag o devi a ray war an aoter, goude beza lakaet an tan er heuneud. Eur sakrifis-losk hag eur hinnig eo, en-deus eur c'hwez-vad dirag an Aotrou.

II. Pennad.

Sakrifis bleud. Sakrifis bara.

1. Pa ray eun den eur hinnig d'an Aotrou e sakrifis, e hinnig a vezo euz a vleud glan, war pehini e skuillo eoul, hag e lakay ezañs.

⁸⁶ eur re : unan bennag.

2. Hag e kaso anezañ d'ar veleien, mibien Aaron ; hag unan anezo a gemero eun dornad euz ar bleud, hag euz an eoul, hag an oll ezañs, hag e tevo anezo war an aoter e koun euz ar hinnig, evel eur c'hwez-vad dirag an Aotrou.
3. Hag ar pezh a chomo a-zilerh ar sakrifis a vezo evid Aaron hag e vibien, evel eun dra zantel-braz euz a ginnigou an Aotrou.
4. Hogen pa ginnigi eur sakrifis bleud poazet er forn, da lavaroud eo baraou dihoell glebiet gand eoul ha kwignou dihoell lardet gand eoul ;
5. Mar deo greet da ginnig gand eun dra fritet, da lavaroud eo gand bleud glebiet gand eoul hag hep goell,
6. e trohi anezañ a-dammou, hag e skuilli eoul warnezañ.
7. Hogen mar grez eur sakrifis gand eun dra poazet war ar hrill, e skuilli ivez eoul war bleud,
8. oh e ginnig d'an Aotrou dre zaouarn ar beleg.
9. Hemañ e ginnigo, hag a denno anezañ an eñvor euz ar sakrifis, hag e zevo evel eur c'hwez-vad dirag an Aotrou.
10. Hogen kement a chomo a-zilerh a vezo evid Aaron hag e vibien, evel eun dra zantel euz a ginnigou an Aotrou.
11. Kement sakrifis a vezo kinniget d'an Aotrou, a vezo greet heb goell, rag ne vezo devet netra gand goell pe gand mel d'an Aotrou.
12. O hinnig a reot hepken evel kenta-frouez⁸⁷, hag evel rouu : hogen ne vezint ket lakaet war an aoter evel eur hinnig a hwez-vad.
13. Kment a ginnigi e sakrifis, a aози gand hollen, ha ne denni ket euz da zakrifis hollen kevredigez da Zoue. En da oll ginnigou e kinnigi hollen.
14. Mar kinnigez d'an Aotrou eur hinnig euz da genta-frouez, tamouezennou hag i c'hoaz glaz, e krazi anezo ouz an tan, hag e vrevi anezo e doare gwiniz, hag evel-se e kinnigi da genta-frouez d'an Aotrou,
15. goude beza skuillet eoul ha lakaet ezañs warnezañ, o veza ma eo eur hinnig d'an Aotrou.
16. Ar beleg a zevo, en eñvor euz ar hinnig, lod euz an ed a vezo bet brevet, hag euz an eoul, hag an oll ezañs.

III.Pennad.

Ostiv a beoh gand ejenned, deñved, ein ha gevr.

1. Mar gra eun den eur hinnig a beoh, ha mar deo eur hinnig a ejenned, pe bar pe barez, e kinnigo anezo dinamm d'an Aotrou.
2. Hag e lakay e zorn war penn e viktim⁸⁸, a vezo lazet e-tal dor tabernakl an testeni : hag ar veleien, mibien Aaron, a skuillo ar gwad war-dro an aoter.
3. Hag i a ginnigo d'an Aotrou al lard a holo bouzellou an ostiv a beoh, hag an oll lard a zo en diabarz ;
4. An diougroazell gand al lard a holo ar hosteziou, ha krohennenn an avu gand an diougroazellouigou.
5. Hag i a zevo kement-se war an aoter gand ar sakrifis-losk, goude beza lakaet tan dindan ar heuneud, evel eur hinnig a hwez-vad d'an Aotrou.
6. Mar gra eur hinnig a beoh, ha mar deo eur hinnig a zeñved, pe bar pe barez, e vezint dinamm.
7. Mar kinnig eun oan dirag an Aotrou,

⁸⁷ kenta-frouez : primedi.

⁸⁸ viktim : euz ar galleg.

8. e lakay e zorn war penn e viktim, a vezo lazeta e-tal dor tabernakl an testeni : ha mibien Aaron a skuillo e wad war-dro an aoter.

9. Hag i a ginnigo euz an ostiv pehuz-se e sakrifis d'an Aotrou, al lard hag al lost oll,

10. gand an diougroazell, hag al lard a holo ar hov, hag an oll vouzellou, hag an diougroazell gand al lard a zo ouz ar hosteziou, ha krohennenn an avu gand an diougroazellouigou.

11. Hag ar beleg a zevo anezo war an aoter, evid boued d'an tan hag evid kinnig d'an Aotrou.

12. Mar kinnig eur havr dirag an Aotrou,

13. e lakay e zorn war he fenn, hag e lazo anezi e-tal dor tabernakl an testeni : ha mibien Aaron a skuillo he gwad war-dro an aoter.

14. Hag i a gemero anezi evid boueta tan an Aotrou, al lard a holo ar hov hag an oll vouzellou,

15. hag an diougroazell gand ar grohennenn a zo ouz he hosteziou, ha lard an avu gand an diougroazellouigou.

16. Hag ar beleg a zevo anezo war an aoter, evid boued d'an tan, hag evel eur hinnig a hwez-vad. An oll lard a vezo d'an Aotrou. Dre eur gwir peurbaduz a ouenn da ouenn, hag en hoh oll diez : ha na zebrot biken na gwad, na lard.

IV. Pennad.

Sakrifis evid ar pehejou a ziouiziegez.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

2. Lavar da vugale Izrael : Pa en-deus pehet eun den dre ziouiziegez a-eneb unan euz a hourhemennou an Aotrou, ha ma en-deus greet eun dra a oa bet lavaret dezañ na raje ket :

3. Mar deo ar beleg, pehini a zo bet eouliet, en-deus pehet o lakaad ar bobl da fazia, e kinnigo d'an Aotrou evid e behed eul leue dinamm.

4. Hag o veza e gaset e-tal dor tabernakl an testeni dirag an Aotrou, e lakay e zorn war penn al leue, hag e lazo anezañ d'an Aotrou.

5. Kemeroud a ray ivez euz a wad al leue, hag e tougo anezañ d'an Aotrou.

6. Hag o veza soubet e viz er gwad, e sparfo gantañ seiz gwech dirag an Aotrou e-tal gouel ar santuar.

7. Lakaad a ray euz an heveleb gwad war kerniel aoter al louzou c'hwez-vad a zo hetuz d'an Aotrou, ha pehini a zo e tabernakl an testeni : hag an dilerh euz ar gwad a skuillo ouz troad aoter ar sakrifis-losk, e-tal dor an tabernakl.

8. Hga e kemero lard al leue kinniget evid ar pehed, ken an hini a holo ar bouzellou, ken an hini oll a zo en diabarz :

9. An diougroazellouigou, hag ar grohennenn a zo ouz ar hosteziou, ha lard an avu gand an diougroazellouigou ;

10. Evel am tenner anezo euz a leue an ostiv a beoh : hag eñ a zevo anezo war aoter ar sakrifis-losk.

11. E-keñver ar hrohenn hag an oll gig, gand ar penn, hag an treid, hag ar bouzellou, hag ar beuzel,

12. Hag an dilerh euz ar horv, e kaso anezo er-mêz euz ar hamp, en eul leh glan, e peleh e taoler peurvuia al ludu : hag eñ o devo war eur bern keuneud, a losko el leh ma vez taolet al ludu.

13. Mar deo kouezet oll bobl Izrael en diouiziegez, ha mar he-deus greet dre ziouiziegez eun dra bennag a-eneb gourhemenn an Aotrou ;

14. Ha mar deu goude da anaoud he fehed, e kinnigo evid he fehed eul leue, a gas e-tal dor an tabernakl.

15. Hag henaoued ar bobl a lakay o daouarn war penn al leue dirag an Aotrou : hag o veza lazeta al leue dirag an Aotrou,

16. ar beleg, pehini a zo bet eouliet, a zougo euz e wad e tabernakl an testeni :

17. hag o veza soubet e viz ennañ, e sparfo seiz gwech e-tal ar ouel.

18. Hag e lakay euz an heveleb gwad war kerniel an aoter a zo dirag an Aotrou e tabernakl an testeni : hag an dilerh euz ar gwad a skuillo ouz troad aoter ar sakrifisou-losk, a zo e-tal dor tabernakl an testeni.

19. Kemeroud a ray e oll lard, hag e tevo anezañ war an aoter.

20. Ober a ray euz al leue-ze, evel ma en-deus greet euz al leue all kentoh : hag ar beleg o pedi evito, an Aotrou a vezo trugarezuz en o heñver.

21. Ar beleg a gaso ivez al leue-mañ er-mêz euz ar hamp, hag e tevo anezañ evel ma en-deus devet an hini kenta, o veza ma eo evid pehed an oll bobl.

22. Mar perh eur priñs, ha mar gra dre ziouiziegez eun dra bennag berzet gand lezenn an Aotrou ;

23. Ha mar deu pelloh da anaoud e behed, e kinnigo da ostiv d'an Aotrou eur bouh yaouank dinamm.

24. Lakaad a ray e zorn war e benn ; ha pa en-devezo e lazeta el leh ma vez greet peurvuia ar sakrifisou-losk dirag an Aotrou, o veza ma eo evid ar pehed,

25. ar beleg a zoubo e viz e gwad ostiv ar pehed, hag a lakay anezañ war kerniel aoter ar sakrifisou-losk, hag a skuillo an dilerh ouz troad an aoter.

26. Hag eñ a zevo al lard war an aoter, evel ma eo ar boaz da ober evid ar viktimou a beoh : hag ar beleg a bedo evitañ, hag evid e behed, hag e vezo distaolet dezañ.

27. Mar peh eur re euz a bobl ar vro dre ziouiziegez, ha mar gra eun dra bennag berzet gand lezenn an Aotrou, ha mar deu da fazia,

28. ha da anaoud e behed, e kinnigo eur havr dinamm ;

29. Hag eñ a lakay e zorn war penn ostiv ar pehed, hag a lazo anezi e leh ar sakrifisou-losk.

30. Hag ar beleg a lakay euz a wad ar havr ouz e viz ; a daolo euz anezañ war kerniel aoter ar sakrifisou-losk, hag a skuillo an dilerh ouz troad an aoter.

31. Godue beza tennet al lard oll, evel ma tenner anezañ euz a viktimou a beoh, e tevo anezañ war an aoter, evel eur c'hwez-vad dirag an Aotrou. Pedi a ray evid ar peher, hag e behed a vezo distaolet dezañ.

32. Mar kinnig evid ar pehed eur viktim e-touez an deñved, e kemero eun dañvad dinamm.

33. Lakaad a ray e zorn war e benn, hag e lazo anezañ el leh ma vez lazeta an ostivou-losk.

34. Ar beleg a gemero euz e wad gand e viz, hag a lakay anezañ war kerniel aoter ar sakrifisou-losk, hag a skuillo an dilerh ouz troad an aoter.

35. Goude beza tennet al lard oll, evel ma tenner anezañ euz an tourh a lazer evid ar peoh, e tevo anezañ evel ezañs an Aotrou war an aoter : padi a ray evitañ, hag evid e behed, hag e vezo distaolet dezañ.

V. Pennad.

Dihaouidigez evid meur a behed.

1. Mar peh eun den, goude beza klevet eur re oh ober le ; mar deo bet test, pe evid beza gwelet, pe evidid beza gouezet, ha ma n'en diskuill ket, e tougo e fallagriez.
2. Ma laka eun den e zorn war eun dra bennag a zo louz, pe war eun dra a vezo bet lazet gand eul loen, pe a vezo maro anezañ e-unan, pe war eul loen-stlej, ha pa en-defe ankounac'haet e loustoni, eo kabluz ha faziet en-deus :
3. Ma en-deus lakaet e zorn war eun dra bennag a louz euz an den, hervez kement loustoni gand pere e helle beza saotret ; goude beza e ankounac'haet, mar deu pelloh d'e anaoud, e vezo dindan ar fazi.
4. Ma en-deus eun den touet ha lavaret gand e vuzellou, ha kretaet gand e le ha gand e heriou penaoz e raje eun dra zroug pe eun dra vad ; goude beza ankounac'haet e fazi, mar deu pelloh d'e anaoud,
5. greet pinijenn evid e behed,
6. ha kemeret euz an tropellou eun oan pe eur menn-gavr ; hag ar beleg a bedo evitañ hag evid e behed.
7. Hogen ma ne hell ket kinnig euz e dropell, kinniget d'an Aotrou diou durzunell, pe diou goulmig, unan evid ar pehed, hag eben evel eur hinnig-losk.
8. Hag eñ o roy d'ar beleg, pehini o kinnig ar genta evid ar pehed, a droy he fenn ouz an eskell, en heveleb doare ma chomo stag ouz ar gouzoug, ha na vezo ket diframmet diouti en oll d'an oll.
9. Hag eñ a sparfo gand he gwad moger an aoter ; ha kement a chomo a skuillo war troad an aoter, o veza ma eo evid ar pehed.
10. Eben a zevo evel eur sakrifis-losk : hag ar beleg a bedo evitañ hag evid e behed, hag e vezo distaolet dezañ.
11. Ma ne hell ket kinnig diou durzunell, pe diou goulmig, e kinnigo evid e behed an degved lodenn euz a eun efi⁸⁹ a vleud glan : ne lakay ket a eoul ennañ nag ezañs warnezañ, o veza ma eo evid ar pehed.
12. E rei a ray d'ar beleg, pehini a gemero eun dornad anezañ, hag e zevo war an aoter, e eñvor an hini en-devezo e ginniget.
13. Hag e pedo hag e tihaouo evitañ ; hag an dilerh en-devezo evel eur gobr evitañ.
14. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
15. Mar peh eun den dre ziouiziegez a-eneb an traou a zo gouestlet d'an Aotrou, e kinnigo evid e behed eun tourh dinamm euz an tropellou, a hell beza prenet gand daou zikl, hervez ment ar santuar.
16. Hag eñ a zistaolo ar pez en-devezo kemeret e gaou, ha pemp gwech kemend-all ohpenn, a roy d'ar beleg, pehini a bedo evid an hini a ginnigo an tourh, hag e vezo distaolet e behed da hemañ.
17. Mar peh eun den dre ziouiziegez, ha mar gra eun dra bennag berzet gand lezenn an Aotrou, hag o veza kalbuz euz ar fazi-ze, eh anavez e fallagriez,
18. e kemero euz a-greiz e dropell eun tourh dinamm, a ginnigo d'ar beleg hervez ar vent hag ar prizadur euz ar pehed ; hag ar beleg a bedo evitañ, o veza ma en-devezo greet ar fazi heb e houzoud, hag e vezo distaolet dezañ,
19. Dre ma en-deus pehet dre ziouiziegez a-eneb an Aotrou.

VI. Pennad.

Lezen ar sakrifisou.

1. An Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

⁸⁹ efi : ? “epha“ e galleg.

2. An den en-devezo pehet, hag, o tisprizoud an Aotrou, en-devezo nahet ouz e nesa ar pez a vezo bet lakaet e tredeog dindan e lealded, pe en-devezo kemeret eun dra dre nerz, pe en-devezo droug-prezeget e gaou ;
3. Pe o veza kavet eun dra gollet, e naho, hag a ray ohpenn eul le faoz, pe en-devezo greet eur pehed all, euz ar re a ra peurvuia an dud ;
4. O veza kendrehet gand e behed,
5. E tistaolo a-grenn kement ha ma vezo fellet dezañ da gaoud dre laeroñsi ; hag e roio eur bempved lodenn ohpenn d'ar perhenn ouz pehini en-devezo greet gaou.
6. Hogen evid e behed e kinnigo eun tourh dinamm euz e dropell, hag e roio anezañ d'ar beleg, hervez ar prizadur hag ar vent euz an droug.
7. Hag ar beleg a bedo evitañ dirag an Aotrou ; ha kement droug en-devezo greet o pehi a vezo distaolet dezañ.
8. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
9. Gourhemenn an dra-mañ da Aaron ha d'e vibien : Setu amañ lezenn ar sakrifis-losk : Devet e vezo war an aoter hed an noz beteg ar mintin : an tan a vezo kemeret euz an aoter heh-unan.
10. Ar beleg a wisko e zae hag e vragou lin ; hag e kemero al ludu a chomo war-lerh an tan gwastuz, ha goude beza e lakaet e-tal an aoter,
11. E laosko e genta gwiskamant, hag o veza lakaet gwsikamañchou all, e tougo al ludu er-mêz euz ar hamp, hag e peurzevo anezañ en eul leh glan.
12. An tan a zevo bepred war an aoter, hag ar beleg a vago anezañ, o lakaad bemdez, dioh ar mintin, keuneud warnezañ ; ha goude beza lakaet ar viktim war ar heuneud, e tevo war-horre lard an ostivou a beoh.
13. Hennez eo an tan peurbaduz, pehini ne dle biken mouga war an aoter.
14. Setu amañ lezenn ar sakrifis hag ar braoued⁹⁰⁹¹ kinnigou a ginnigo mibien Aaron dirag an Aotrou ha dirag an aoter.
15. Ar beleg a gemero eun dornad bleud a vezo bet sparfet gand eoul, hag an oll ezañs a vezo bet lakaet war-horre ar bleud ; hag e tevo anezañ war an aoter, evel eun dra a hwez-vad dirag an Aotrou.
16. Hogen Aaron hag e vibien a zebro ar pez a chomo euz ar bleud heb goell, hag e tebrint anezañ el leh santel, e-tal dor an tabernakl.
17. Rag se ne vezo ket lakaet a hoell ennañ, rag lod anezañ a vez kinniget d'an Aotrou evel ezañs. Eun dra zantel-braz eta e vezo, evel ar pez a ginniger evid ar pehed hag evid an droug.
18. Ar wazed euz a ouenn Aaron hepken a zebro anezañ. Eun dra eo hag a vezo reiz ha peurbaduz en o gouenn diwar-benn sakrifisou an Aotrou : piou bennag a dañvo anezañ, a dleo beza santel.
19. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
20. Setu kinnig Aaron hag e vibien, a dleont da ober d'an Aotrou e deiz o eoulerez. An degved lodenn euz a eun efi a vleud a ginnigint evel eur sakrifis peurbaduz, an hanter dioh ar mintin, hag an hanter all dioh ar pardaez.
21. Goude beza e sparfet gand eoul, e poazo anezañ er billig ; hag ar beleg a vezo deuet da her d'e dad dre wir, a ginnigo anezañ, hag eñ tomm, evel eun dra a hwez-vad d'an Aotrou :
22. Hag e tevo oll war an aoter.
23. Hogen oll sakrifisou ar veleien a vezo peurzevet gand an tan, ha den ne zebro anezo.

⁹¹ braoued : e brov.

24. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
25. Lavar an dra-mañ da Aaron ha d'e vibien : Setu amañ lezenn an ostiv evid ar pehed : lazeta e vezo dirag an Aotrou el leh ma kinnigo ar sakrifis-losk : eun dra zantel-braz eo.
26. Ar beleg e ginnigo a zebro anezañ el leh santel, e-tal dor an tabernakl.
27. Kement tra a stoko ouz e gig, a vezo santellaet. Mar kouez euz e wad war eur zae bennag, e vezo gwalhet el leh santel.
28. Al lestr pri e pehini e vezo bet poazet, a vezo torret : mar deo a arem al lestr, e vezo skarzeta, ha gwalhet gand dour.
29. Kement gwaz euz a ouenn ar veleien a zebro euz ar hiz-se, o veza ma eo santel-braz.
30. E-keñver an ostiv a lazer evid ar pehed, a behini e touger ar gwad e tabernakl an testeni evid ober an dihaoudigez er santuar, ne vezo ket debret, hogen devet e vezo gand an tan.

VII. Pennad.

Euz an ostiv a beoh.

1. Setu ivez lezenn an ostiv evid ar gwall : santel-braz eo.
2. Rag-se el leh ma vezo lazeta eul loen-losk, e vezo lazeta ivez eur viktim evid ar gwall : e wad a vezo skuillet war-dro an aoter.
3. Kinniget e vezo anezañ al lost hag al lard a holo ar bouzellou ;
4. An diougroazellouigoù, hag al lard a zo war ar hostezioù, ha krohennenn an avu gand an diougroazellouigoù.
5. Hag ar beleg a zevo anezo war an aoter : ezañs an Aotrou eo evid ar gwall.
6. Kement gwaz euz a ouenn ar veleien a zebro euz ar hig-se el leh santel, o veza ma eo santel-braz.
7. Evel ma kinniger eun ostiv evid ar pehed, he hinniger ivez evid ar gwall : eul lezenn hepken a vezo evid an diou ostiv : d'ar beleg en-devezo he hinniget, e vezo.
8. Ar beleg a ginnig viktim ar sakrifis-losk en-devezo he hrohenn.
9. Kement sakrifis bleud a vez poazet er forn, pe rostet war ar hrill, pe aozet er billig, a vezo d'ar beleg en-devezo he hinniget.
10. Mar bez glebiet gand eoul, pe mar bez seh, e vezo rannet en eun doare unvan etre oll vibien Aaron.
11. Setu amañ lezenn an ostiv peohuz a vez kinniget d'an Aotrou.
12. Mar deo evid trugarekaad e vez greet ar hinnig, e vezo benniget baraou dihoell glebiet gand eoul, ha kouignou dihoell lardet gand eoul, ha bleud glan poazet, ha gwastelloù glebiet ha kemmesket gand eoul.
13. Kinniget e vezo ivez baraou goell, gand an ostiv a drugarez, a ginniger evid ar re beohuz.
14. Unana anezo a vezo kinniget d'an Aotrou evid primidi, hag e vezo evid ar beleg a skuillo gwad an ostiv.
15. Debret e vezo kig an ostiv en heveleb deiz, ha ne chomo netra anezi beteg ar mintin.
16. Mar kinnig eur re eun ostiv goude gouestl, pe a youl frank, e vezo debret ivez an heveleb deiz ; hogen mar chom eun dra anezi evid antronoz, e vezo lezet he debri.
17. Hogen kement a vezo kavet anezi en trede deiz a vezo devet gand an tan.

18. Mar tebr eur re euz a gig ar viktim a beoh en trede deiz, e vezo didalvez ar hinnig, ha ne dalvezo ket da neb he hinnigo ; hogen en eneb piou bennag a vezo en em zaotret evel-se o tebri euz an ostiv-se, a vezo kabluz a wall-ober.

19. Ar hig en-devezo stoket ouz eun dra dihlan, ne vezo ket debret, hogen e vezo devet gand an tan ; neb a vezo glan, a zebro kig ar viktim a beoh.

20. Piou bennag, hag eñ saotret, a zebro euz a gig an ostivou peohuz kinniget d'an Aotrou, a yelo da goll euz a-greiz e bobl.

21. Ha piou bennag en-devezo lakaet e zorn war loustoni eun den pe eul loen, pe eun dra all a hell saotra, hag en-devezo debret euz ar hig-se, a varvo euz a-greiz e bobl.

22. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

23. Komz ouz mibien Izrael, o lavaroud : Ne zebrot ket lard an dañvad, nag an ejenn, nag ar havr.

24. Kemeroud a reot evid meur a dra lard eul loen maro anezañ e-unan, pe euz an hini a zo bet paket gand eul loen all.

25. Mar debr eur re euz al lard a dle beza kinniget d'an Aotrou evel ezañs, e varvo euz a-greiz e bobl.

26. Ne gemerot ket kennebeud da voued gand aneval ebed, na gwad evned, na gwad loened.

27. Kement den en-devzo debret gwad, a varvo euz a-greiz e bobl.

28. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

29. Komz ouz mibien Izrael, o lavaroud : Neb a ginnig eun ostiv a beoh d'an Aotrou, ra ginnigo en heveleb amzer ar sakrifis, da lavaroud e braoued⁹² kinnig.

30. Derhel a ray en e zaouarn lard an ostiv, ha poullig he halon : ha goude m'en-devezo o gouestlet d'an Aotrou oh o hinnig, o roio d'ar beleg,

31. Pehini a zevo al lard war an aoter : hogen poullig ar galon a vezo evid Aaron hag e vibien.

32. Skoaz dehou an ostivou a beoh a gouezo d'ar beleg gand ar primidi.

33. An hini euz a vibien Aaron en-devezo kinniget ar gwad hag al lard, en-devezo ivez en e lod ar skoaz dehou.

34. Rag miret em-eus euz a gig an ostivou peohuz bugale Izrael, poull ar galon a zaver dirazon, hag ar skoaz a zo bet rannet : hag o roet em-eus d'ar beleg Aaron ha d'e vibien, dre eul lezenn beurbaduz, e-touez pobl Izrael.

35. Henez eo gwir eoulierez Aaron hag e vibien, e lidou an Aotrou, en deiz ma en-deus o hinniget Moizez, evid ober ar garg a veleien ;

36. Hag en-deus an Aotrou gourhemennet da vugale Izrael da rei dezo, dre eul lid peurbaduz a ouenn da ouenn.

37. Hounnez eo lezenn ar sakrifis-losk, ar sakrifis evid ar pehed hag evid ar gwall, evid ar gouestl hag evid ar viktimou a beoh ;

38. Lezenn a roas an Aotrou da Voizez war menez Sinai, pa hourhemennas da vugale Izrael kinnig o roou d'an Aotrou e distro Sinai.

VIII. Pennad.

Sakradurez Aaron hag e vibien.

1. An aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

2. Kemer Aaron gand e vibien, o gwiskou, o eoul sakr, al leue a dle beza kinniget evid ar pehed, daou dourh hag eur gest bara dihoell ;

⁹² braoued : e brovou.

3. Ha dastum an oll bobl e-tal dor an tabernakl.
4. Moizez e reas ar pezh en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ. Hag o veza dastumet an oll bobl e-tal dor an tabernakl,
5. E lavaras dezo : Setu petra en-deus gourhemennet an Aotrou da ober.
6. Ha neuze e tiskouezas Aaron hag e vibien. Ha goude m' o-doa o gwalhet,
7. E lakaas d'ar beleg-braz ar zae lin a-zindan, gand ar gouriz war-horre ; hag e lakaas dezañ ar zae hlaz, hag an efod war-horre ;
8. Ha goude beza stardet gand ar gouriz, e lakaas outañ ar rational, war pehini edo ar geriou-mañ : KELENNADUREZ HA GWIRIONEZ.
9. Lakaad a reas ivez an diarenn war e benn : ha war he gorre, oh an tal, e lakaas an daolenn aour gouestlet evel m' en-doa gourhemennet an Aotrou.
10. Kemeroud a reas ivez an eoul sakr, gand pehini eh eoulias an tabernakl gand e oll listri.
11. Ha goude m' en-doa sparfet an aoter seiz gwech, eh eoulias anezi, hag heh oll listri, hag e santellaas gand eoul ar veol gand he zroad.
12. Skuilla a reas ivez eoul war penn Aaron, hag e eoulias, hag e sakras anezañ.
13. Hag o veza kinniget mibien Aaron, e wiskas dezo saeou lin, e lakaas gourizou war o zro, ha mitrou war o fenn, evel m' en-doa gourhemennet an Aotrou.
14. Kinnig a reas ivez eul leue evid ar pehed ; ha goude m' o-doa Aaron hag e vibien lakaet o daouarn war penn al leue,
15. E lazaz Moizez anezañ : hag o kemeroud e wad, e soubas e viz ennañ, hag e lakaas anezañ war kerniel an aoter tro-war-dro : hag o veza evel-se he hlannaet hag he santelalet, e skuillas an dilerh euz ar gwad ouz troad an aoter.
16. Neuze e tevas war an aoter al lard a oa war ar bouzellou, ha krohennenn an avu, hag an diougroazellouigou, gand o lard.
17. Hag eñ a zevas al leue er-mêz euz ar hamp, gand ar hrohenn, hag ar hig, hag ar beuzel, evel m' en-doa gourhemennet an Aotrou.
18. Kinnig a reas ivez eun tourh e sakrifis-losk ; ha goude m' o-doe Aaron hag e vibien lakaet o daouarn war penn an tourh,
19. E lazaz Moizez anezañ, hag e skuillas e wad war-dro d' an aoter.
20. Troha a reas an tourh a-dammou, hag e tevas en tan ar penn, an izili, hag al lard,
21. Goude beza gwalhet ar bouzellou hag an treid : hag e tevas an tourh oll war an aoter, o veza ma oa eur sakrifis-losk a hwez-vad d' an Aotrou, evel m' en-doa e hourhemennet dezañ.
22. Eun tourh all a ginnigas, evid sakradurez ar veleien : hag Aaron hag e vibien, o veza lakaet o daouarn war penn an tourh,
23. E lazaz Moizez anezañ ; hag o kemeroud euz e wad, e lakaas euz anezañ war pennig skouarn zehou Aaron, ha war meud e zorn dehou, ha war meud e droad dehou.
24. Kinnig a reas ivez mibien Aaron : ha goude m' en-doe lakaet euz a wad an tourh a oa bet lazaz, war pennig skouarn dehou pep hini anezo, ha war meud o dorn dehou, ha war meud o zroad dehou, e skuillas an dilerh euz ar gwad war an aoter tro-war-dro.
25. Hogen lakaad a reas a du al lard, hag al lost, hag al lard oll a holo ar bouzellou, ha krohennenn an avu, hag an diougroazellou gand o lard, hag ar skoaz zehou.
26. Hag o kemeroud euz a gavell ar baraou dihoell a oa dirag an Aotrou, eur bara dihoell, eur wastell kemmesket gand eoul, hag eur gouign, e lakaas anezo war al lard, ha war ar skoaz zehou.
27. Hag o lakaas oll etre daouarn Aaron hag e vibien pere o zavas dirag an Aotrou ;

28. Ha Moizez o veza o hemeret euz o daouarn, o devas war aoter ar sakrifis-losk, o veza ma oa eur hinnig a zakradurez, hag eur sakrifis a hwez-vad d'an Aotrou.

29. Hag e kemeras poull-kalon an tourh a oa bet laz et evid ar zakrerez, hag e savas anezañ dirag an Aotrou, evel e lod, diou e hourhemenn.

30. Hag o kemeroud an eoul sakr, hag ar gwad a oa war an aoter, e taolas anezo war Aaron, ha war e wiskamañchou, war mibien Aaron, ha war o gwiskamañchou.

31. Ha goude m'en-doe sakret anezo en o gwiskamañchou, e hourhemennas dezo, o lavaroud : Poazit ar hig e-tal dor an tabernakl, ha debrit eñ eno ; debrit ivez bara ar zakradurez, a zo bet lakaet er havell, evel m'en-deus e hourhemennet an Aotrou, o lavaroud : Aaron hag e vibien a zebro anezo.

32. Ha kement a chomo euz ar hig hag euz ar bara-ze, a vezo devet gand an tan.

33. N'ez eot kuit ivez euz a dal-dor an tabernakl e-pad seiz devez, beteg an deiz e pehini e vezo tremenet amzer ho sakradurez : rag ar zakradurez a zo peurhreet e seiz devez ;

34. Evel ma hoh-eus e welet bremañ, evid ma vezo peurhreet lidou ar sakrifis.

35. Noz-deiz e chomot en tabernakl, oh ober gward an Aotrou, gand aon na varvjot : rag evel-se eo bet gourhemennet din.

36. Hag Aaron hag e vibien a reas kement en-doa lavaret an Aotrou dre henou Moizez.

IX. Pennad.

Aaron a ginnig meur a zakrifis.

1. D'ar seizved devez, Moizez a halvas Aaron hag e vibien, hag henaoued Izrael ; hag e lavaras da Aaron :

2. Kemer euz da dropell eul leue evid ar pehed, hag eun tourh evid ar sakrifis-losk, an eil hag egile dinamm, ha kinnig anezo dirag an Aotrou.

3. Lavar ivez da vugale Izrael : kemerit eur bouh evid ar pehed, hag eul leue hag eun oad bloaz hag i dinamm, evid eur sakrifis-losk.

4. Eun ejenn hag eun tourh evid an ostivou a beoh ; ha lazit o dirag an Aotrou, o kinnig, e sakrifis pep hini anezo, bleud glan glebiet gand eoul ; rag an Aotrou en em ziskouezo hirio deoh.

5. Lakaad a rejont eta e-tal dor an tabernakl ar pez en-doa lavaret Moizez dezo : ha pa oa eno an oll bobl en he sav,

6. E lavaras Moizez : Setu petra en-deus an Aotrou gourhemennet deoh ; grit eñ, hag e hloar en em ziskouezo deoh.

7. Hag eñ a lavaras da Aaron : Tosta ouz an aoter, ha laz evid da behed : kinnig eur sakrifis-losk, ha ped evidout hag evid ar bobl ; ha pa'z-pezo laz et an ostiv evid ar bobl, ped eviti, evel m'en-deus gourhemennet an Aotrou.

8. Ha raktal Aaron o tostaad ouz an aoter, a lazas eul leue evid e behed.

9. E vibien a zegasas dezañ ar gwad, e pehini e soubas e viz, e lakaas war kerniel an aoter, hag e skuillas an dilerh ouz troad an aoter.

10. Devi a reas ivez war an aoter al lard, an diougrozellouigou ha krohennenn an avu, pere a zo evid ar pehed, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.

11. Hogen ar hig hag ar hrohenn a loskas war an tan er-mêz euz ar hamp.

12. Laza a reas ivez viktim ar sakrifis-losk : hag e vibien a zegasas dezañ ar gwad, a skuillas war-dro d'an aoter.

13. Degas a rejont ivez dezañ an ostiv trohet a-dammou, gand ar penn hag an oll izili ; hag o devas oll war an aoter ;

14. Goude beza gwalhet en dour ar bouzellou hag an treid.
15. Laza a reas ivez eur bouh a ginnigas evid pehed ar bobl : hag o veza glannaet an aoter,
16. E reas eur sakrifis-losk.
17. Lakaad a reas ohpenn ar braoued-kinnig a vez kinniget en heveleb amzer, hag e tevas anezo war an aoter, ohpenn ober lidou sakrifis-losk ar mintin.
18. Laza a reas ivez eun ejenn hag eun tourh, pere a oa ostivou a beoh evid ar bobl ; hag e vibien a zegasas dezañ ar gwad anezo, a skuillas war an aoter tro-war-dro.
19. Degas a rejont ivez lard an ejenn, ha lost an tourh, an diougroazellouigou gand o lard, ha krohennenn an avu ;
20. Hag e lakajont anezo war ar poullou-kalon ; ha goude ma oe devet al lard war an aoter,
21. Aaron a lakaas a du ar poullou-kalon, hag an diskoaz dehou, o sevel anezo dirag an Aotrou, evel m'en-doa gourhemennet Moizez.
22. Hag oh astenn e zaouarn war-zu ar bobl, e vennigas anezi. Ha goude beza evel-se peurginniget an ostivou evid ar pehed, an ostivou-losk, hag an ostivou a beoh, e tiskennas.
23. Moizez hag Aaron a yeas neuze e tabernakl an testeni, ha pa oent deuet er-mêz, e vennigjont ar bobl. Ha gloar an Aotrou en em ziskouezas d'an oll bobl.
24. Hag eun tan a zevas euz an Aotrou, hag a zevas an ostiv-losk, hag al lard a oa war an aoter. Pa welas an oll bobl kement-se, e veuljont⁹³ an Aotrou oh en em deurel war o genou.

X. Pennad.

Mibien Aaron devet gand tan an neñv. Ar gwin berzet d'ar veleien.

1. Neuze Nadab hag Abiu, mibien Aaron, o veza kemeret o ezañsouerou, a lakaas enno tan ne oa ket diwar an aoter, hag ezañs war-horre, hag a ginnigas dirag an Aotrou an tan-ze a-ziavêz ; ar pezh na oa ket bet gourhemennet dezo.
2. Hag eun tad deuet a-zirag an Aotrou, a zevas anezo, hag e varvjont dirag an Aotrou.
3. Ha Moizez a lavaras da Aaron : Setu petra en-deus lavaret an Aotrou : Santellaet e vezin er re a dosta ouzin, ha meulet e vezin dirag an oll bobl. Aaron, o klevoud kement-se, a davas.
4. Moizez o veza galvet Misael hag Elisafan, mibien Oziel, eontr Aaron, a lavaras dezo : It ha tennit ho preudeur a-zirag ar santuar, ha kasit o er-mêz euz ar hamp.
5. Mond a rejont raktal, hag e kemerjont anezo en doare ma oant gourvezet, hag i gwisket gand o zaeou lin ; hag e taoljont anezo er-mêz, evel ma oa bet gourhemennet dezo.
6. Ha Moizez a lavaras da Aaron ha da Eleazar, ha da Itamar e vibien : Na zizoloit ket ho penn, ha na rogit ket ho tillad, gand aon na varvjuh ha na zavje ar vuaneged war an oll bobl. Ra welo ho preudeur hag oll di Izrael⁹⁴ diwar-benn an tangwall a zo bet c'hwezet gand an Aotrou.
7. Hogen c'hwi ne zeuit ket er-mêz euz an tabernakl, pe anez e varvot : rag eoul ar sakradur santel a zo warnoh. Hag i a reas evel m'en-doa gourhemennet Moizez.
8. An Aotrou a lavaras ivez da Aaron :

⁹³ e veuljont : tud ar bobl.

⁹⁴ oll di Izrael : oll diez Izrael.

9. Na evot ket a win, nag a gement a hell mezvi, na c’hwi nag ho mibien, pa’z eot e tabernakl an testeni, gand aon na varvjuh : rag eur gourhemenn peurbaduz eo en ho rummou :

10. Evid ma ho-pezo ar skiant da anaoud eun dra zakr dioh eun dra dizakr, eun dra zaotr dioh eun dra dizaotr ;

11. Ha ma teskot da vugale Izrael va oll lezennou em-eus roet dezo, me an Aotrou, dre zorn Moizez.

12. Neuze Moizez a lavaras da Aaaron, ha da Eleazar, ha da Itamar, e vibien, a oa chomet dezañ : kemerit ar sakrifis a zo chomet euz a ginnig an Aotrou, ha debrit eñ heb goell e-tal an aoter, o veza ma eo eun dra zantel-braz.

13. E zebri a reot el leh santel, o veza ma eo bet roet dit ha d’az mibien euz a ginnigou an Aotrou, evel ma eo bet gourhemennet din.

14. Debrit a reot ivez, te, da vibien ha da verhed, en eul leh glan-braz, ar poull-kalon a zo bet kinniget, hag ar skoaz a zo bet lakaet a-du : rag euz a ostivou peohuz bugale Izrael int bet miret evidout, hag evid da vibien :

15. O veza ma o-deus savet dirag an Aotrou ar skoaz, ar poull-kalon hag al lard a zever war an aoter, ha ma’z eo kement-se dit ha d’az mibien, dre eul lezenn beurbaduz, evel ma en-deus gourhemennet an Aotrou.

16. Koulskoude Moizez pehini a glaske ar bouh a oa bet kinniget evid ar pehed, a gavas e oa bet devet ; hag o veza savet droug ennañ ouz Eleazar hag Itamar, mibien Aaron, a oa chomet, e lavaras :

17. Perag n’hoh-eus-hu ket debret el leh santel ostiv ar pehed, a zo santel-braz, hag a zo bet roet deoh, evid ma tougot fallagriez ar bobl, ha ma pedot eviti dirag an Aotrou :

18. Pa eo gwir penaoz n’eo ket bet douget euz ar gwad-se er santuar, hag e tlefeh debri anezañ el leh santel, evel ma eo bet gourhemennet din ?

19. Hag Aaron a lavaras : Ar viktim evid ar pehed a zo bet kinniget hirio, hag ar sakrifis-losk ivez dirag an Aotrou : hogen c’hoarvezet eo ganen ar pez a welit : penaoz em-be-me gellet debri euz an ostiv-se, pe plijoud d’an Aotrou el lidou, pa ema glaharet va halon ?

20. Pa glevas Moizez kement-se, e kavas mad e zigarez.

XI. Pennad.

Euz an anevaled glan hag euz ar re zihlan.

1. An Aotrou a gomzas neuze ouz Moizez hag ouz Aaron, o lavaroud :
2. Livirit da vugale Izrael : E-touez an oll anevaled euz an douar, setu an anevaled a dleot da zebri.
3. Kement loen a zo faoutet e garn, hag a zaskir, euz a henez e tebrot.
4. Hogen kement hini a zaskir, hag en-deus karn ha n’eo ket faoutet, evel ar hañval hag ar re all, ne zebrot ket euz anezañ, hag evel loened dihlant e vezint deoh.
5. Ar honikl⁹⁵ pehini a zaskir, ha n’eo ket faoutet karn e dreid, a zo dihlant.
6. Ar had ivez a zo dihlant ; rag daskiria a ra, hogen n’eo faoutet e garn.
7. An oh ivez ; rag faoutet eo e garn, hogen ne zaskir ket.
8. Ne zebrot ket euz a gig ar re-ze, ha ne lakaot ket ho torn war o gagnou, rag dihlant int deoh.

⁹⁵ ar honikl : an “daman“ e gwirionez.

9. E-touez an anevaled a zo ganet en doureier, setu ar re a dleot da zebri. Kement en-deus brenkou ha skant, ken er mor, ken er steriou hag el lennou ; euz anezo e tebrot.

10. Hogen kement a fiñv hag a vev en doureier, ha n'en-deus ket a vrenkou nag a skant, a vezo argaruz deoh.

11. Hag erezuz : ne zebrot ket euz o hig, hag e tehot dioh o gagnou.

12. Kement ha n'en-devezo ket a vrenkou nag a skant en doureier, a vezo dihlan.

13. E-touez an evned, setu ar re a bere ne dleot ket debri, hag a zo deoh da dehoud : an erer, hag ar grifon, hag ar falhan⁹⁶,

14. Hag ar skoul, hag ar gup, hervez e ouenn,

15. Hag ar vran, ha kement a zo heñvel outi.

16. Hag an aotruz⁹⁷, hag ar gaouenn, hag an dour-yar, hag ar sparfell dioh e ouenn,

17. Hag ar harmelod⁹⁸, hag ar morvran, hag an ibis,

18. Hag ar sin⁹⁹, hag ar bongorz, hag ar beg-ruz¹⁰⁰,

19. Hag an herlegon, hag ar heveleg-mor hervez e ouenn, hag an houperig, hag al logodenn-zall,

20. Kement evn a gerz war bevar droad, a vezo argaruz deoh.

21. Hogen kement a gerz war bevar droad, hag a zo hirroh e dreid a-ziadreñv, hag a lamm war an douar,

22. E hellit debri euz anezañ, evel ma'z eo ar brukuz¹⁰¹ en e ouenn, hag an atakuz¹⁰², hag an ofiomakuz¹⁰³, hag ar hillog-raden dioh e ouenn.

23. Hogen kement evn ha n'en-deus nemed pevar droad, a vezo argaruz deoh :

24. Ha piou bennag a lakay e zorn war o gagnou, a vezo saotret, hag a vezo dihlan beteg ar pardaez.

25. Ha mar deo red dezañ dougen eur re euz an anevaled-se, hag i maro, e walho e zillad, hag e vezo dihlan beteg kuz-heol.

26. Kement loen en-deus karn, ha n'eo ket faoutet, ha na zaskir ket, a vezo dihlan : ha neb a lakay e zorn warnezañ, a vezo saotret.

27. E-touez an oll loened pevarzroadeg, an hini a gerz war e balvou, a vezo dihlan : neb a lakay e zorn war e gagn, a vezo saotret beteg ar pardaez.

28. Ha piou bennag a zougo gagnou al loened-se, a walho e zillad, hag a vezo dihlan beteg ar pardaez : rag ar re-ze oll a zo dihlan deoh.

29. E-touez an anevaled a fiñv war an douar, e vennot c'hoaz ar re-mañ evel dihlan ; ar gaerell, hag al logodenn, hag ar gurlaz-vor, pep hini dioh e ouenn ;

30. Ar minoh, hag ar hameleon, hag ar stellion¹⁰⁴, hag ar glazard, hag ar hoz :

31. Ar re-ze oll a zo dihlan. Neb a lakay e zorn war o gagnou, a vezo dihlan beteg ar pardaez :

32. Hag ar pez war pehini e vezo kouezet eun dra euz o gagnou, a vezo saotret, ken eul lestr-prenn pe eur gwiskamant, ken krehin ha saeou-reun : an oll listri e pere e reer eun dra, a vezo gwalhet gand dour, hag a chomo saotret beteg ar pardaez ; hag goude-ze e vezint glannaet.

⁹⁶ falhan : an efreiz (marteze).

⁹⁷ aotruz : lotrus.

⁹⁸ ar harmelod : an hoper-noz.

⁹⁹ sin : alarh.

¹⁰⁰ ar beg-ruz : ? (morvran ?)

¹⁰¹ brukuz : ?

¹⁰² atakuz : ?

¹⁰³ ofiomakuz : ?

¹⁰⁴ ar stellion : ?

33. Hogen al lestr-pri e pehini e vezo kouezet eun dra euz ar re-mañ, a vezo saotret, hag evid-se e vezo red e derri.
34. Mar skuiller dour euz ar re-mañ war ar boued a zebrit, e vezo dihlan : ha kement braoued a evot euz al listri-ze a vezo dihlan.
35. Hag ar pez war pehini e vezo kouezet eun dra euz ar gagnou-mañ, a vezo dihlan ; pe fornigellou, pe kaoteriou, a vezo torret, o veza ma vezint dihlan.
36. Hogen ar feunteuniou, hag ar puñsou, hag an oll buñsou-glao a vezo glan. Hogen neb a lakay e zorn war gagnou al loened, a vezo saotret.
37. Mar kouez war an had, ne vezo ket saotret hemañ.
38. Hogen mar skuill eur re dour war an had, ha mar deu goude da steki ouz eur gagn, e vezo saotret raktal.
39. Mar deu da vervel unan euz al loened a hellit da zebri, neb a stoko e hagn, a vezo dihlan beteg ar pardaez.
40. Neb a zebro euz anezañ pe e zougo, a walho e zillad, hag a vezo dihlan beteg ar pardaez.
41. Kement a stlej war an douar, a vezo argaruz, ha ne vezo ket kemeret euz anezañ evid boued.
42. Kement loen pevarzroadeg a gerz war boull e galon, pe en-deus meur a droad, pe en em stlej war an douar, ne zebrot ket euz anezañ, rag argaruz eo.
43. Na zaotrit ket hoh eneou, ha na lakit ket ho taouarn war hini euz ar re-ze, gand aon na zeufeh da veza dihlan.
44. Rag me eo an Aotrou ho Toue : bezit sent, rag me a zo sant. Na zaotrit ket hoh eneou ouz an oll amprevaned a fiñv war an douar.
45. Rag me eo an Aotrou, en-deus ho tennet euz a vro an Ejipt, evid ma vijen da Zoue deoh. Bezit sent, rag me a zo sant.
46. Hounnez eo al lezenn diwar-benn al loened, hag an evned, ha kement aneval beo a fiñv en dour, pe a stlej war an douar.
47. Evid ma anavezot ar pez a zo glan deoh, ar pez a zo dihlan, ha ma ouiot petra a dleit da zebri pe da zisteurel.

XII. Pennad.

Glanerez ar gwraez.

1. An aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
2. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Eur wreg pa he-devezo gwelet heh ozah, ma han eur paotr, e vezo dihlan e-pad seiz devez, hervez an deizioù euz a rann he mizioù¹⁰⁵.
3. Hag ar bugel a vezo emwadet d'an eizved deiz.
4. Hogen hi a chomo c'hoaz tri devez ha tregont e gwad he glanerez¹⁰⁶. Ne lakay he dorn war netra a zantel, ha n'ez ay ket e-barz ar santuar, ken na vezo sevenet he glanerez.
5. Hogen ma han eur baotrez, e vezo dihlan e-pad diou zizun, hervez ar boaz evid red ar mizioù, hag e chomo c'hweh devez ha tri-ugent e gwad he glanerez.
6. Ha pa vezo tremenet deizioù he glanerez, pe evid eur mab, pe evid eur verh, e tougo eun oan bloaz e sakrifis-losk hag eur goulmig pe eun durzunellig, evid ar pehed, e-tal dor tabernakl an testeni, hag o roio d'ar beleg,

¹⁰⁵ he mizioù : heh amzeriou.

¹⁰⁶ e gwad he glanerez : glannaad he gwad.

7. Pehini o hinnigo dirag an Aotrou, hag a bedo eviti ; hag evel-se e vezo glannaet-hi euz a red he gwad. Hounnez eo al lezenn evid an hini a han eur paotr pe eur baotrez.

8. Ma ne gav ket he dorn kement-se, ha ma ne hell ket kinnig eun oan, e kemero diou durzunell, pe diou goulmig, unan evid ar sakrifis-losk, hag eben evid ar pehed : hag ar beleg a bedo eviti, hag hi a vezo glannaet evel-se.

XIII. Pennad.

Lezenn diwar-benn al loventez.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez hag Aaron, o lavaroud :
2. An den, e krohenn pe e kig pehini e vezo savet eun disheñvedigez pe eur glogorenn, pe eun dra luhuz bennag, da lavaroud eo gouli al loventez, hennez a vezo kaset d'ar beleg Aaron pe da unan euz e vibien.
3. Mar gwel ar beleg penaoz ema al loventez war ar hrohenn, penaoz ar bleo a zo troet e liou gwenn, penaoz al lehiou e pere ema al loventez a zo diou doare donnoh eged ar hrohenn pe ar hig all : gouli al loventez eo, ha kas a ray an den diou ar re all.
4. Hogen ma ez eus eur gwennder luhuz war ar hrohenn, ma n'eo ket donnoh eged ar hig all, ha mar deo ar bleo euz al liou kent, ar beleg a zerro anezañ e-pad seiz devez.
5. Hag e sello piz outañ d'ar seizved devez : ha ma n'eo ket kresket al loventez, ha ma n'eo ket en em ledet donnoh er hrohenn, e serro c'hoaz anezañ e-pad seiz devez.
6. Hag e sello piz outañ d'ar seizved devez : ha mar deo teñvalloh al loventez, ha ma n'eo ket en em ledet war ar hrohenn, e tisklêrio anezañ glan, rag ar gal eo : an denze a walho e zillad, hag a vezo glan.
7. Goude ma eo bet gwelet gand ar beleg, ha disklêriet glan gantañ, mar deu adarre al loventez da greski, e vezo c'hoaz degaset d'ar beleg,
8. Hag e vezo barnet evel dihlan.
9. Pa vezo gouli al loventez war eun den, e vezo degaset d'ar beleg ;
10. Hag eñ a zello piz outañ. Mar deo gwenn liou ar hrohenn, ha mar deo troet doare ar bleo, ha mar gweler ivez ar hig beo :
11. Eul loventez koz-braz ha kinviet er hrohenn e vezo barnet ; rag-se ar beleg a zisklêrio anezañ dihlan, ha ne zerro ket anezañ, o veza ma eo eun dihlanded anad.
12. Hogen ma red al loventez e doare bleud war ar hrohenn, ha mar golo ar hrohenn oll adaleg ar penn beteg an treid e kement a zo e gwel,
13. Ar beleg a zello piz outañ, hag a varno penaoz al loventez-se a zo glan-braz, o veza ma eo oll troet e gwenn ; ha dre ze an den a vezo glan.
14. Hogen pa vezo gwelet ar hig beo gand loventez ennañ ;
15. Neuze e vezo disklêriet dihlan gand ar beleg, ha lakaet e-touez ar re zihlan : rag mar deo mesket ar hig beo gand loventez, eo dihlan.
16. Mar deu adarre da drei e gwenn, ha mar golo an den oll ;
17. Ar beleg a zello piz outañ, hag a zisklêrio anezañ glan.
18. Pa vezo bet e kig hag e krohenn eur re eur gouli-lineg, hag a vezo bet pareet ;
19. Ha mar gweler eur gleizenn wenn, pe damhell el leh ma edo ar gouli, e vezo degaset an den d'ar beleg ;
20. Pehini a welo penaoz al loventez a zo donnoh eged ar hig all, ha penaoz ar bleo a zo troet e gwenn, a zisklêrio anezañ dihlan : rag gouli al loventez eo a zo tarzet er gouli-lineg.

21. Mar deo ar bleo euz al liou kent, hag ar gleizenn damzeñval, ha ma n'eo ket houmañ donnoh eged ar hig all, ar beleg a zerro anezañ e-pad seiz devez.
22. Ha mar deu an droug da greski, e tisklêrio penaoz eo al loventez.
23. Hogen ma chom en he leh, kleizenn ar gouli-lineg n'eo ken, hag an den a vezo disklêriet glan.
24. Mar deo bet devet eun den en e gig pe en e grohenn, ha pa vezo pareet, mar deu ar gleizenn da veza gwenn pe rouz :
25. Ar beleg a zello piz outi ; ha mar gwel penaoz eo troet e gwenn, ha penaoz en em gav donnoh eged ar hrohenn all ; e tisklêrio anezi dihlan, o veza ma eo tarzet gouli al loventez er gleizenn.
26. Ma n'eo ket kemmet liou ar bleo, ha ma n'eo ket donnoh leh ar gouli eged ar hig all, ha mar deo damdeñval doare al loventez, ar beleg a zerro anezañ e-pad seiz devez ;
27. Hag er seizved deiz, e sello piz outañ. Mar kresk al loventez war ar hrohenn, e tisklêrio anezañ dihlan.
28. Hogen mar chom al liou gwenn en e leh, ha ma teu damzeñval, gouli an devadur eo, ha dre ze e vezo disklêriet glan, o veza ma eo kleizenn eun devadur.
29. Mar sav al loventez war penn eur gwaz pe eur vaouez, pe e baro eur gwaz, ar beleg a zello piz outo ;
30. Ha mar deo donnoh al leh-se eged ar hig all, mar deo melen ar bleo, ha moannoh eged diagent, ar beleg a zisklêrio anezañ dihlan, o veza ma eo loventez ar penn hag ar baro.
31. Hogen mar gwel penaoz leh ar gouli a zo kevatal d'ar hig a zo war-dro, ha mar deo du ar bleo, e serro anezañ e-pad seiz devez ;
32. Hag er seizved deiz e sello outañ. Ma n'eo ket kresket ar gouli, mar deo chomet ar bleo en o liou, ha mar deo leh ar gouli kevatal d'ar hig all,
33. E vezo touzet an den, nemed leh ar gouli, hag e vezo serret e-pad seiz devez all.
34. Er seizved deiz, mar gwel ar beleg penaoz eo chomet ar gouli en e leh, ha penaoz n'eo ket donnoh eged ar hig all, e tisklêrio anezañ glan ; ha goude m'en-devezo gwalhet e zillad, e vezo glan.
35. Hogen goude ar glanerez, mar deu c'hoaz ar merk da greski war ar hrohenn,
36. Ne glasko mui mar deo kemmet ar bleo e liou melen, rag dihlan anad eo.
37. Hogen mar chom ar merk heb en em astenn, ha mar deo du ar bleo, eh anavezo penaoz eo pareet an den, hag e tisklêrio distag penaoz eo glan.
38. Mar gweler eo gwenn krohenn eur gwaz pe eur vaouez,
39. Ar beleg a zello piz outo : ha ma anavez penaoz eo damzeñval ar merk gwenn a weler war ar hrohenn, ra ouezo penaoz n'eo ket al loventez, hogen eur merk a liou gwenn, ha penaoz eo glan an den.
40. Ar gwaz euz a benn pehini e kouez bleo, a zo moal ha glan :
41. Ha mar kouez ar bleo diwar an tal¹⁰⁷, eo tal-voal ha glan.
42. Hogen mar tarz eur merk gwenn pe hell war e benn-voal pe war e dal-voal,
43. Pa en-devezo gwelet ar beleg, e varno anezañ heb arvar evid al loventez a zo savet er moalder.
44. Piou bennag eta a vezo saotret gand al loventez, hag a vezo lakaet a du dre varnedigez ar beleg,
45. En devezo gwiskou disgwri, e benn en noaz, e zremm goloet gand e zae ; hag e harmo, o lavaroud penaoz eo dihlan ha saotret.

¹⁰⁷ diwar an tal : deuz tu e zremm.

46. E-keid amzer ma vezo lovr ha dihlan, e chomo e-unan er-mêz euz ar hamp.
47. Mar dema al loventez en eur zae hloan pe lin,
48. Er steuenn pe en anneuenn, pe en eur hrohenn, pe en eun dra greet gand krehin ;
49. Mar deo saotret gand nammou gwenn pe hell, e vezo kemeret evel eul loventez, ha diskouezet d'ar beleg ;
50. Pehini goude beza sellet piz, a zerro anezi e-pad seiz devez.
51. Hag er seizved deiz, e sello piz adarre ouz ar zae ; ha ma anavez penaoz eo kresket an nammou, eul loventez kinviet eo ; barn a ray penaoz an dillad-se ha kement tra e pehini e vezo kavet nammou, a zo saotret.
52. Hag rag-e e vezint devet en tan.
53. Mar gwel ar beleg penaoz n'eo ket kresket an nammou
54. E hourmenenno gwalhi ar pezh e pehini ema al loventez hag e serro anezañ e-pad seiz devez all.
55. Ha mar gwel penaoz n'eo ket distroet d'e genta doare, petra bennag n'eo ket kresket al loventez, e varno ar zae-ze dihlan, hag e losko anezi gand an tan, o veza ma eo eta al loventez en he gorre, pe enni oll.
56. Hogen mar deo teñvalloh leh al loventez, goude ma eo bet gwalhet ar zae, ar beleg he rogo, hag he ranno diou ar zae.
57. Hogen goude ze, mar bez gwelet eul loventez gwag ha mond-dond el lehiou pere e oa dindan kent, e tle beza losket oll gand an tan.
58. Ma'z a kuit an nammou, ar beleg a walho eun eil gwech ar pezh a zo glan, hag e vezo glannaet.
59. Setu eno lezenn al loventez e-keñver an dillad pe a hloan, pe a lin, euz ar steuenn pe euz a anneuenn, pe e kement a zo greet gand krehin ; ma vezo gouezet pe e vezint glan pe dihlan.

XIV. Pennad.

Glanerez eun den lovr, e di hag e zillad.

1. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
2. Setu al lid a vezo greet evid an den lovr, pa vezo lakaet glan ; degaset e vezo d'ar beleg.
3. Hag hemañ, o veza eet er-mêz euz ar hamp, hag o veza anavezet penaoz eo eet al loventez digantañ,
4. A hourhemmenno d'an hini a dle beza glannaet, benniga evitañ daou holvan beo, a zo aotreet o debri, ha koad sedr¹⁰⁸, ha tane, ha sikadez¹⁰⁹.
5. Gourhemenni a ray c'hoaz laza unan euz ar golvaned en eul lestr-pri war dour red :
6. Hag e soubo ar golvan all a zo beo, gand ar hoad sedr, hag an tane, hag ar sikadez, e gwad ar golvan a vezo bet lazec ;
7. Hag e sparfo gantañ seiz gwech an hini a dle beza glannaet, evid ma vezo karzet hervez al lezenn : hag e laosko ar golvan beo, evid ma nijo dre ar parkeier.
8. Ha pa en-devezo an den gwalhet e zillad, e touzo an oll vleu euz e gorr, hag en em walho gand dour : hag o veza karzet evel-se, ez ay er hamp, en heveleb doare koulskoude ma chomo seiz devez er-mêz euz e delt :

¹⁰⁸ sedr : galleg.

¹⁰⁹ sikadez : galleg (hysope).

9. Hag ar seived devez e touzo bleo e benn, hag e varo, hag e hourrennou, hag oll vleo e gorr ; hag o veza c'hoaz gwalhet e zillad, hag e gorr,
10. En eizved deiz e kemero daou oan dinamm, hag eun dañvad bloaz dinamm ivez, ha tri degved¹¹⁰ flour-bleud gwiniz¹¹¹ ar sakrifis, glebiet gand eoul hag ohpenn eur chopinad eoul.
11. Ha pa en-devezo ar beleg pehini a garz an den-ze, e ginniget gand an oll draouze dirag an Aotrou e dor tabernakl an testeni ;
12. E kemero unan euz an ein, hag e kinnigo anezañ evid an droug, gand ar chopinad eoul ; hag o veza o hinniget oll dirag an Aotrou,
13. E lazo an oan, el leh ma lazer peurvuia an ostiv evid ar pehed hag an ostiv-losk, da lavaroud eo el leh santel. Rag an ostiv evid an droug, kerkoulz hag an hini evid ar pehed a zo d'ar beleg : ha santel-braz eo.
14. Hag ar beleg o kemeroud euz a wad an ostiv a zo bet lazet evid an droug, a lakay euz anezañ war penn skouarn zehou an hini a zo karzet, ha war meudou e zorn dehou hag e droad dehou ;
15. Hag e lakay euz ar chopinad eoul en e zorn kleiz,
16. Hag e soubo biz e zorn dehou enni, hag e sparfo ganti seiz gwech dirag an Aotrou.
17. Hag e skuillo an eoul a chomo a-zilerh en e zorn kleiz, war penn skouarn zehou an hini a zo karzet, ha war meud e zorn dehou, ha war meud e droad dehou, war bere ar gwad a zo bet skuillet evid an droug,
18. Ha war penn an den.
19. Hag e pedo ar beleg evitañ dirag an Aotrou, hag e ray ar sakrifis evid ar pehed : neuze e lazo ar viktim-losk,
20. Hag hel lakay war an aoter, gand he braoued-kinnig, hag an den a vezo karzet hervez al lezenn.
21. Mar deo paour, ha ma ne hell ket kaoud ar pezh a zo lavaret, e kemero eun oan a vezo kinniget evid an droug, evid ma pedo ar beleg evitañ, hag an degved lodenn euz a vleud glan glebiet gand eoul evid eur sakrifis, hag eur chopinad eoul,
22. Ha diou durzunell, pe diou goulmig a bere e vezo unan evid ar pehed, hag eben evid ar sakrifis-losk :
23. Hag en eizved deiz euz e hlanerez e kinnigo anezo d'ar beleg, e-tal tabernakl an testeni, dirag an Aotrou.
24. Hag ar beleg o kemeroud an oan evid an droug hag ar chopinad eoul, o gorreo war eun dro ;
25. Hag o veza lazet an oan, e lakay euz e wad war penn skouarn zehou an hini a zo karzet, ha war meud e zorn dehou, ha war meud e droad dehou.
26. Hogen skuilla a ray lod euz an eoul en e zorn kleiz ;
27. Hag o veza soubet enni biz e zorn dehou, e sparfo seiz gwech dirag an Aotrou :
28. E lakay anezi war penn skouarn zehou an hini a zo karzet, ha war meud e zorn dehou, ha war meud e droad dehou, e leh ma oa bet skuillet ar gwad evid an droug.
29. Hogen lakaad a ray war penn an hini a zo karzet, an dilerh euz an eoul a zo en e zorn kleiz, evid ma lakay an Aotrou da veza trugarezuz en e geñver.
30. Kinnig a ray ivez eun durzunell pe eur goulmig,
31. Unan evid an droug, hag eben evid ar sakrifis-losk, gand e vraoued-kinnig.
32. Hennez eo sakrifis an den lovr, pehini ne hell ket kaoud kement a zo dleet evid ar glanerez.
33. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez hag Aaron, o lavaroud :

¹¹⁰ tri degved teir degvedenn (3/10)

¹¹¹ flour-bleud gwiniz : epha (?)

34. Pa viot eet e douar Kanaan, e roin deoh e kerz, mar bez gouli al loventez en eun ti bennag,

35. Perhenn an ti a yelo da gaoud ar beleg, hag a lavaro dezañ : Me a gred ema al loventez em zi.

36. Neuze ar beleg a hourhemenco degas er-mêz kement a zo en ti, a-barz ma'z ay e-barz, ha ma welo ma ema al loventez ennañ, gand aon na zeufe da veza dihlan kement a zo en ti. Goude ez ay e-barz da weloud mar dema al loventez en ti.

37. Ha mar gwel war ar mogerioù, evel toullouigoù diforhet gand nammou diliou pe damruz, ha donnoh evid an dilerh,

38. E teuy er-mêz euz a zor an ti, hag e serro anezañ raktal e-pad seiz devez.

39. Hag o veza distroet d'ar seizved devez, ar beleg a zello piz ouz an ti ; ha mar gwel e vezo kresket al loventez,

40. E hourhemenco tenna ar vein e pere e vezo al loventez hag o zeurel er-mêz euz a gêr en eul leh dihlan ;

41. Graka an ti e-unan en diabarz tro war dro, ha teurel ar poultr euz ar grakerezh er-mêz euz a gêr en eul leh dihlan ;

42. Lakaad mein all e-leh ar re a vezo tennet, ha pria an ti gand pri all.

43. Hogen goude ma vezo tennet ar vein, goude ma vezo graket ar poultr, ha priet an ti gand pri all,

44. Pa zeuy ar beleg e-barz, mar gwel eo distroet al loventez, hag ez eo goloet ar mogerioù gand nammou ; eul loventez kinviet eo, hag an ti a zo dihlan.

45. Diskaret e vezo raktal, hag ar vein anezañ, ar hoad hag ar poultr oll a vezo taolet er-mêz euz a gêr en eul leh dihlan.

46. Neb a yelo en ti-ze pa vezo bet serret, a vezo dihlan beteg ar pardaez.

47. Ha neb a gousko ennañ, hag a zebro eun dra bennag, a walho e zillad.

48. Pa'z ay ar beleg en ti, mar gwel penaoz n'eo ket kresket al loventez ennañ, goude ma eo bet priet a-nevez, a hlano anezañ evid beza deuet yah :

49. Hag evid e hlana e kemero daou holvan, ha koad sedr, ha tane, ha sikadez :

50. Hag o veza lazeta unan euz ar golvaned en eul lestr pri, war dour-red,

51. E kemero ar hoad sedr, hag ar sikadez, hag an tane, hag ar golvan beo, hag o zoubou oll e gwad ar golvan a zo bet lazeta, hag en dour-red, hag e sparfo seiz gwech an ti ;

52. Hag eñ a hlano anezañ e gwad ar golvan lazeta, hag en dour-red, hag er golvan beo, hag er hoad sedr, hag er sikadez, hag an tane.

53. Ha pa en-devezo laosket ar golvan beo da nijal er parkeier, e pedo evid an ti, hag a vezo glannaet hervez al lezenn.

54. Hounnez eo al lezenn diwar-benn an oll loventezioù, hag an oll vloñsou.

55. Ha loventez an dillad hag an tiez ;

56. Hag ar hleizennou, hag ar porbolennou, hag an nammou luhuz, hag an oll livioù disheñvel ;

57. Evid ma vezo gellet anaoud mar deo glan pe dihlan eun dra.

XV. Pennad.

Dihlanted ar gwaz hag ar vaouez.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez hag Aaron, o lavaroud :

2. Komzit ouz bugale Izrael, ha livirit dezo : Ar gwaz a laosko da redeg e sper, a vezo dihlan.

3. Ha neuze e vezo gwelet penaoz eo techet d'an droug-se, pa en em zastumo da bep pred eun dourenn louz en em stago ouz e gig.
4. Beb gwele war pehini e vezo bet kousket, peb leh e pehini e vezo bet azezet, a vezo dihlan.
5. Ma laka eur re e zorn war e wele, e walho e zillad, ha goude beza en em walhet gand dour, e vezo dihlan beteg ar pardaez.
6. Ma azez el leh ma vezo bet azezet an den, e walho ivez e zillad ; ha goude beza en em walhet gand dour, e vezo dihlan beteg ar pardaez.
7. Neb en-devezo lakaet e zorn war e gig a walho e zillad ; ha goude beza en em walhet gand dour, e vezo dihlan beteg ar pardaez.
8. Mar taol an den-ze euz e vabouz war an hini a zo glan, hemañ a walho e zillad ; ha goude beza en em walhet gand dour, e vezo dihlan beteg ar pardaez.
9. An dibr war pehini e vezo bet azezet, a vezo dihlan.
10. Ha kement a vezo bet dindan an hini a zo ar beradur sper gantañ a vezo dihlan beteg ar pardaez. Neb a zougo eun dra euz ar re-ze, a walho e zillad ; ha goude beza en em walhet gand dour, e vezo dihlan beteg ar pardaez.
11. Piou bennag a vezo bet stoket gand eun den en doare-ze, a-barz ma en-devezo gwalhet e zaouarn, hemañ a walho e zillad ; ha goude beza en em walhet gand dour, e vezo dihlan beteg ar pardaez.
12. Al lestr-pri war behini en-devezo lakaet e zorn, a vezo torret ; hag al lestr-prenn a vezo gwalhet gand dour.
13. Mar deoh yac'haet an hini en-doa an droug-se, e nivero seiz devez goude ma vezo bet glannaet ; ha goude ma en-devezo gwalhet e zillad hag e oll gorv e doureier red, e vezo glan.
14. Ha d'an eizved deiz e kemero diou durzunell, pe diou goulmig, hag e teuy dirag an Aotrou e-tal dor tabernakl an testeni, hag e roy anezo d'ar beleg,
15. Pehini a ginnigo unan evid ar pehed, hag eben evid ar sakrifis-losk ; hag e pedo evitañ dirag an Aotrou, evid ma vezo glannaet euz a redadur e sper.
16. Ar gwaz euz a bihini e redo ar sper, a walho e oll gorv gand dour ; hag e vezo dihlan beteg ar pardaez.
17. Gwalhi a ray gand dour ar zae hag ar hrohenn en-devezo bet warnezañ, hag e vezo dihlan beteg ar pardaez.
18. Ar vaouez gand pehini e vezo eet, en em walho gand dour, hag e vezo dihlan beteg ar pardaez.
19. Ar vaouez pehini he-devezo he red-gwad beb miz a vezo rannet e-pad seiz devez.
20. Piou bennag a stoko outi, a vezo dihlan beteg ar pardaez.
21. Ha kement tra war behini e vezo bet kousket pe azezet e deizio he rannerez, a vezo dihlan.
22. Neb en-devezo stoket ouz he gwele, a walho e zillad ; ha goude beza en em walhet gand dour, e vezo dihlan beteg ar pardaez.
23. Piou bennag en-devezo lakaet e zorn war eun dra war pehini e vezo bet azezet, a walho e zillad ; ha goude beza en em walhet gand dour, e vezo dihlan beteg ar pardaez.
24. Mar da eur gwaz d'he havoud en amzer ma ema he miziou¹¹² ganti, e vezo-eñ dihlan e-pad seiz devez : hag an oll weleou war bere e kousko a vezo dihlan.

¹¹² miziou : amzeriou.

25. Ar vaouez gand pehini e c'hoarvez meur a zeiz eur red-gwad en amzer ha n'ema ket he miziou ganti, pe da behini goude he miziou ne ehan ket ar gwad da redeg, a vezo dihlan evel en amzer he miziou, keit ha ma pado kement-se.

26. Kement gwele war pehini e vezo bet kousket, ha kement tra war pehini e vezo bet azezet a vezo dihlan.

27. Piou bennag en-devezo lakaet e zorn warnezo, a walho e zillad ; ha goude beza en em walhet gand dour, e vezo dihlan beteg ar pardaez.

28. Mar chom ar gwad heb redeg, e nivero-hi seiz devez evid he glanerez.

29. Ha d'an eizved deiz e kinnigo eviti d'ar beleg diou durzunell, pe diou goulmig, e-tal tabernakl an testeni.

30. Hag ar beleg a ginnigo unan evid ar pehed, hag eben evid ar sakrifis-losk ; hag e pedo eviti dirag an Aotrou hag evid ar red euz he glanerez.

31. Deski a reot eta da vugale Izrael en em viroud dioh an dihlanded, evid na varvint ket en o zaotrou, goude beza mastaret va zabernakl a vezo en o hreiz.

32. Hounnez eo al lezenn a zell ouz an hini a laosk da redeg e sper, pe en em zaotr o weloud eur vaouez ;

33. Pe ouz ar vaouez a zo rannet en abeg d'he miziou, pe he-deus eur red-gwad, pe ouz ar gwaz en-devezo kousket ganti hag hi evel-se.

XVI. Pennad.

Peur ha penaoz e tle mond ar beleg er santuar.

1. An Aotrou a gomzas ivez ouz Moizez, goude ma oa maro an daou vab euz a Aaron, pa oent lazet evid beza kinniget tan a-ziavêz d'an Aotrou.

2. Hag e hourhemennas dezañ, o lavaroud : Lavar da Aaron, da vreur, n'ez ay ket e peb amzer er santuar ar re a zo e-diabarz ar ouel dirag ar golher a holo an arh, evid na varvo ket ; rag en em ziskouez a rin er goabrenn war an orakl ;

3. N'ez eet ket ken n'en-devezo greet an dra-mañ : Kinnig a ray eul leue evid ar pehed, hag eun tourh e sakrifis-losk.

4. Eur zae lin a wisko, golei a ray gand bragou lin ar pez a dle beza kuzet ; en em houriza a ray gand eur gouriz lin ; lakaad a ray war e benn eur mitr lin ; rag ar gwiskou-ze a zo santel ; hag o lakaad a ray oll, goude beza en em walhet.

5. Hag e tegemero digand an oll strollad euz a vugale Izrael daou vouh evid ar pehed, hag eun tourh evid ar sakrifis-losk.

6. Ha pa en-devezo benniget al leue, ha pa en-devezo pedet evitañ e-unan hag evid e di,

7. E savo an daou vouh dirag an Aotrou e-tal dor tabernakl an testeni ;

8. hag o teurel ar sort war an daou vouh, unan evid an Aotrou, hag egile evid ar bouh da gas kuit ;

9. Ar bouh war pehini e vezo kouezet ar sort evid an Aotrou, a vezo kinniget gand Aaron evid ar pehed :

10. Hag ar bouh war pehini e vezo kouezet ar sort evid ar bouh da gas kuit, a vezo lakaet beo gantañ dirag an Aotrou, evid ma ray pedennou warnezañ, ha ma kaso anezañ d'an distro.

11. Goude beza greet kement-se hervez ar gourhemenn, e kinnigo al leue ; hag o pedi evitañ e-unan hag evid e di, e lazo anezañ.

12. Neuze e kemero an ezañsouer en-devezo karget leun gand glaou beo diwar an aoter, hag o kemeroud gand e zorn al louzou c'hwez-vad a vezo bet greet evid ezañs, ez ay en tu all d'ar ouel e Sant ar Zent ;

13. Evid, pa vezo lakaet al louzou c’hwez-vad war an tan, ma teuy ar maged hag an êzenn anezo da holei an orakl a zo war an testeni, ha ne varvo ket.

14. Kemeroud a ray ivez euz a wad al leue, hag e sparfo seiz gwech gand e viz ar golher war-zu ar sav-heol.

15. Ha goude ma en-devezo lazet ar bouh evid pehed ar bobl, e tougo e wad en diabarz euz ar ouel, evel ma eo bet gourhemennet diwar-benn gwad al leue, evid ma sparfo dirag an orakl,

16. Ha ma hlano ar santuar dioh saotrou bugale Izrael, ha dioh o faziou, hag o oll behejou. An heveleb lid a ray war tabernakl an testeni, a zo savet en o hreiz e-mesk ar saotrou euz o zeltou.

17. Na vezet den ebed en tabernakl, pa’z ay ar beleg-braz e Sant ar Zent, evid pedi evitañ e-unan hag evid e di, hag evid an oll strolladeuz a Izrael, ken na vezo deuet er-mêz.

18. Hogen pa vezo deuet er-mêz etrezeg an aoter za zo dirag an Aotrou, ra bedo evitañ e-unan ; ha goude beza kemeret euz a wad al leue, hag euz a wad ar bouh, ra skuillo anezañ war gerniel an aoter tro-war-dro :

19. Hag o sparfa seiz gwech an aoter gand e viz lakaet er gwad, e hlannao hag e santellao anezi dioh saotrou bugale Izrael.

20. Goude ma en-devezo glannaet ar santuar, hag an tabernakl, hag an aoter, e kinnigo ar bouh beo :

21. Hag o veza lakaet e zaou zorn war penn ar bouh, e tisklêrio oll fallagriezou bugale Izrael, hag o oll wallou, hag o oll behejou ; hag oh o lakaad gand droug-pedenn war penn ar bouh, her haso d’an distro gand eun den dare evid-se.

22. Ha goude ma en-devezo douget ar bouh o fallagriezou en eul leh a-du, hag e vezo bet laosket en distro,

23. E tistroy Aaron e tabernakl an testeni, ha goude beza kuitaet ar gwiskamañchou en-doa gwisket kent pa’z ee er santuar, hag o veza o lezet eno,

24. E walho e gig el leh santel, hag e lakay e zillad. Ha goude ma vezo deuet er-mêz, ha ma en-devezo kinniget e sakrifis-losk hag hini ar bobl, e pedo evitañ e-unan hag evid ar bobl ;

25. Hag e tevo war an aoter al lard a zo bet kinniget evid ar pehejou.

26. Hogen an hini en-devezo kaset ar bouh da gas kuit, a walho gand dour e zillad hag e gorv, ha goude-ze e teuy e-barz er hamp.

27. Kaset e vezo er-mêz euz ar hamp al leue hag ar bouh a vezo bet lazet evid ar pehed, hag a vezo bet douget o gwad er santuar, evid ma vezo sevenet an dihaoudigez ; hag e vezo devet en tan ar hrohenn, ar hig hag ar beuzel.

28. Ha piou bennag en-devezo o devet, a walho e zillad hag e gig en dour, ha goude-ze e teuy e-barz er hamp.

29. Hag an dra-ze a vezo reiz ha peurbaduz en ho touez. Er seizved miz, d’an degved deuz euz ar miz, e hlaharot hoh eneou, ha ne reot labour ebed, ken ar re a zo ganet en ho pro, ken ar re a zo deuet euz a-ziavêz bro hag a gerz en ho touez.

30. En deiz-se eo e vezo greet ho tihaoudigez, ha glanedigez hoh oll behejou : dirag an Aotrou e vior glannaet :

31. Rag sabbat an ehan eo, hag e hlaharot hoh eneou gand eul lid peurbaduz.

32. Hogen an dihaoudigez-se a vezo greet gand ar beleg a zo bet sakret, hag a zo bet sakret ivez e zaouarn evid ma ray ar garg a veleg e-leh e dad ; hag e wisko ar zae lin, hag ar gwiskamañchou santel.

33. Hag eñ a zihaouio ar santuar, tabernakl an testeni hag an aoter ; ar veleien ivez hag ar bobl oll.

34. Hag an dra-mañ a vezo deoh eul lezenn da viroud bepred, ma pedot eur wech ar bloaz evid bugale Izrael, hag evid o oll behejou. Moizez a reas eta evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ.

XVII. Pennad.

Doue a hourhemenn d'an Izraelited na raint sakrifis nemed da Zoue hepken, ha na zebrint ket a wad.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
2. Komz ouz Aaron hag e vibien, hag ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Setu ar pezh a hourhemenn an Aotrou, o lavaroud :
3. Piou bennag euz a di Izrael en-devezo lazet eun ejenn, pe eun dañvad, pe eur havr er hamp pe er-mêz euz ar hamp.
4. Ha n'en-devezo ket e ginniget d'an Aotrou e-tal dor an tabernakl, a vezo kabluze euz a skuill gwad : hag e varvo euz a-greiz e bobl, evel pa en-defe skuillet gwad eun den.
5. Rag-se bugale Izrael a dle degas d'ar beleg o ostivou, ar re a lazont peurvuia er park, evid ma vezent gouestlet d'an Aotrou e-tal dor tabernakl an testeni, ha ma vezint lazet d'an Aotrou evel ostivou a beoh.
6. Hag ar beleg a skuillo ar gwad war aoter an Aotrou e-tal dor tabernakl an testeni, hag e tevo al lard evel eur c'hwez hetuz d'an Aotrou.
7. Ha biken mui ne lazint o ostivou d'an diaoulou, gand pere int en em zaotret. An dra-ze a vezo reiz ha peurbaduz evito hag evid o nested.
8. Lavaroud a ra ivez dezo : Piou bennag euz a di Izrael, pe euz an diavêzidi a ergerz en ho touez, a ginnigo eur sakrifis-losk pe eur viktim.
9. Ha n'her haso ket e-tal dor tabernakl an testeni, evid ma vezo kinniget d'an Aotrou, a varvo euz a greiz e bobl.
10. Piou bennag euz a di Izrael, pe euz an diavêzidi a ergerz en o zouez, en-devezo debret gwad, e savin va dremm a-eneb e ene hag e tennin anezañ euz a-greiz e bobl ;
11. Ha buhez ar hig a zo er gwad : hag e roet em-eus deoh, evid ma vezo deoh war an aoter, evid diskarg hoh eneou, ha ma vezo ar gwad dihaouidigez evid an ene.
12. Rag-se em-eus lavaret da vugale Izrael : Hini ahanoh, nag euz an diavêzidi a ergerz en ho touez, na zebret gwad.
13. Piou bennag euz a vugale Izrael pe euz an diavêzidi a ergerz en ho touez en-devezo kemeret en hemolh pe er rouejou eul loen pe eul labous a heller da zebri, a skuillo e wad, hag e holoy gand douar.
14. Rag buhez an oll gig a zo er gwad ; ha dre-ze em-eus lavaret da vugale Izrael : Ne zebrot ket euz a wad pep kig ; rag buhez pep kig a zo er gwad : ha piou bennag a zebro anezañ, a vezo lazet.
15. Kement den en-devezo debret euz a eul loen maro anezañ e-unan, pe a vezo bet paket gand eul loen all, daoust pe euz ar vro pe divroad eo an den, e walho e zillad, hag en em walho e-unan en dour ; hag eñ a vezo dihlan beteg ar pardaez : hag en doare-ze e teuy da veza glan.
16. Ma ne walh ket e zillad hag e grohenn, e tougo e fallagriez.

XVIII. Pennad.

Lezennou diwar-benn an dimeziou difennet, ha diwar-benn ar hlanded.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
2. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Me eo an Aotrou ho Toue.
3. Ne reot ket hervez boaz bro an Ijipt, e pehini oh bet o chom : ha ne reot ket hervez doare bro-Ganaan e pehini ho lakain da vond ; ha ne heuliot ket o lezennou.
4. Seveni a reot va gourhemennou, miroud a reot va helennou, hag e kerzot enno. Me eo an Aotrou ho Toue.
5. Mirit va lezennou ha va helennou : an den o miro a vevo drezo. Me eo an Aotrou.
6. Den ne dostay ouz ar vaouez a zo kar dezañ dre ar gwad, evid dizoloi he mezegez¹¹³. Me eo an Aotrou.
7. Ne zizoloi ket mezegez da dad na da vamm : da vamm eo ; ne zizoloi ket he mezegez.
8. Ne zizoloi ket mezegez gwreg da dad ; rag mezegez da dad eo.
9. Ne zizoloi ket mezegez merh da vab, pe merh da verh ; rag da vezegez eo.
10. Ne zizoloi ket mezegez merh gwreg da dad, he-deus ganet d'az tad, hag a zo c'hoar dit.
11. Ne zizoloi ket mezegez c'hoar da dad ; rag kig da dad eo.
12. Ne zizoloi ket mezegez c'hoar da vamm ; rag kig da vamm eo.
13. Ne zizoloi ket mezegez da eontr kompez, ha ne di ket da gaoud e wreg ; rag gand nesanded eo stag ouzit.
14. Ne zizoloi ket mezegez da verh-kaer ; rag gwreg da vab eo ; ha ne zizoloi ket he noazder.
15. Ne zizoloi ket mezegez gwreg da vreur ; rag mezegez da vreur eo.
16. Ne zizoloi ket mezegez da wreg hag he merh. Ne gemeri ket merh he mab, na merh he merh evid dizoloi o mezegez, o veza ma'z int he hig-hi, ha ma'z eo ar gevredigez-se eun iñsest.
17. Ne gemeri ket c'hoar da wreg evid beza keñvererez dezi, ha ne zizoloi ket he mezegez e-pad ma vezo beo da wreg.
18. Ne dostai ket ouz eur wreg pehini a vezo he miziou ganti, ha ne zizoloi ket he loustoni.
19. Ne di ket da gavoud gwreg da nesa, ha n'en em zaotri ket gand kemmesk an had.
20. Ne roi ket euz da ouenn evid beza gouestlet da idol Moloh, ha ne zaotri ket ano da Zoue. Me eo an Aotrou.
21. N'ez i ket da gavoud eur gwaz e-giz pa ve eur vaouez ; rag eun dra argaruz eo.
22. N'ez i ket da gavoud loen ebed, ha n'en em zaotri ket gantañ. Ar vaouez ne hourvezo ket dindan eul loen, ha n'en em unano ket gantañ, rag eun torfed eo.
23. N'en em zaotrot ket gand an oll draou-ze, gand pere eo en em zaotret an oll boblou a gasin kuit dirazoh.
24. Hag gand pere eo bet saotret ar vro-ze : ha me a zeuy da gastiza he fallagriezou, evid ma tistaolo gand euz he broiz.
25. Mirit va lezennou ha va barnedigeziou, ha na rit hini euz an traou argaruz-se, na c'hwi tud ar vro, nag an divroidi a zo deuet da chom en ho mesk.
26. Hag ar re a zo bet o chom er vro-ze en ho raog, o-deus greet an oll draou argaruz-se, hag o-deus saotret ar vro.
27. Diwallit eta, mar grit an heveleb traou, na zeuy d'ho tisteurel, evel ma he-deus distaolet ar bobl a zo bet enni en ho raog.

28. Mirit va gourhemennou. Na rit ket ar pezh o-deus greet ar re a oa en ho raog, ha n'en em zaotrit ket gand an traou-ze. Me eo an Aotrou ho Toue.

XIX. Pennad.

Meur a lezenn.

1. An aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
2. Komz ouz strollad oll vugale Izrael, ha lavar dezo : Bezit sent, rag me a zo sant, me an Aotrou ho Toue.
3. Ra zoujo pep hini e dad hag e vamm. Mirit va deizou sabat. Me eo an Aotrou ho Toue.
4. Na droit ket ouz an idolou, ha na rit ket deoh doueed teuzet. Me eo an Aotrou ho Toue.
5. Ma lazit eun ostiv a beoh d'an Aotrou, evid tenna e drugarez warnoh,
6. e tebrot anezi en dezi ma vezo bet lazit, hag antronoz : hag e tevot gand an tan kement a vezo chomet a-zilerh en trede deiz.
7. Mar tebr eur re euz anezi goude an eil devez, e vezo dizantel ha fallagr :
8. Hag e tougo e fallagriez, o veza ma en-deus saotret ar pezh a oa gouestlet d'an Aotrou, hag e varvo euz a-greiz e bobl.
9. Pa vedot an edou euz ho touar, n'o zouzot ket beteg kohenn an douar ; ha ne zastumot ket an tamouezennou a vezo chomet.
10. Ne zastumot ket kennebeud en ho kwinienn a bodou a vezo chomet, nag ar greunennou a vezo kouezet ; o lezel a reot evid ar beorien hag evid an ergerzerien. Me eo an Aotrou ho Toue.
11. Ne laerot ket. Ne leverot ket a hevier ; ha den ne douello e nesa.
12. Ne doui ket e gaou em ano, ha ne zaotri ket ano da Zoue. Me eo an Aotrou.
13. Ne damalli ket e gaou da nesa, ha ne waski ket anezañ dre nerz. Gobr da zvezour ne chomo ket en da di beteg ar mintin.
14. Ne liviri ket a zroug euz an den bouzar, ha ne liki netra dirag an den dall a hellfe e lakaad da goueza : hogen douja a ri an Aotrou da Zoue, rag me eo an Aotrou.
15. Ne ri netra a-eneb gwir, ha ne varni ket e gaou. Ne zisprizi ket an den paour, ha ne enori ket an den galloudeg a-eneb gwir. Barn da nesa gand lealded.
16. Ne vezi nag eun droug-prezeger, nag eul labenner kuz e-touez da bobl. Ne zavi ket a-eneb gwad da nesa. Me eo an Aotrou.
17. Ne gasai ket da vreur en da galon, hogen difazia a ri anezañ dirag an oll, gand aon n'az-pe ar pehed en abeg dezañ.
18. Na glask ket en em veñji, hag ankounac'ha ar gaou a-berz da genvroiz. Karoud a ri da vignon evel dout da-unan. Me eo an Aotrou.
19. Mirit va lezennou. Na laka ket da loen d'en em bara gand loened euz a eur ouenn all. Ne hadi ket da bark gand hadou disheñvel. Ne zougi ket a zillad gweet gand diou neudenn disheñvel.
20. Ma'z a eur gwaz da gousked gand eur vaouez evid en em unani ganti, ha mar deo houmañ eur vatez hag en oad da zimezi, hogen ma n'eo ket bet dasprenet gand arhant, ha ma n'eo ket bet roet he frankiz dezi, e vezint kannet o-daou, ha ne varvint ket, o veza ma ne oa ket frank hi¹¹⁴.
21. Hogen eñ, evid e behed, a ginnigo eun tourh d'an Aotrou e-tal dor tabernakl an testeni :

¹¹⁴ ma ne oa ket frank hi : ne oa ket hi bet frankizet.

22. Ar beleg a bedo evitañ hag evid e behed dirag an Aotrou ; hag e kavo trugarez, hag e behed a vezo distaolet dezañ.

23. Pa viot eet er vro am-eus lavaret e vije roet deoh, ha pa ho-pezo plantet enni gwez frouez, ez emwado anezo : ar frouez kenta a zavo anezo a vezo dihlan deoh, ha ne zebrot ket anezo.

24. Hogen ar pevare bloaz hoh oll frouez a vezo santellaet ha gouestlet d'an Aotrou.

25. Hogen er pempved bloaz e tebrot ar frouez, goude beza dastumet kement o-devezo douget ar gwez. Me eo an Aotrou ho Toue.

26. Ne zebrot netra gand ar gwad. Ne ziouganot ket ; ha ne arvestot ket an huñvreou.

27. Ne grennot ket ho pleo ; ne douzot ket ho park.

28. Ne reot ket a drohou en ho kig, en abeg da eun den maro, ha ne reot na skeudenn nag arouez war ho korv. Me eo an Aotrou.

29. Arabad eo dit gwalla da verh, gand aon na ve saotret an douar, ha na ve leun a zroug.

30. Mirit va deiziou sabat, ha doujit va zantuar. Me eo an Aotrou.

31. Ne zistroit ket evid mond da heul ar strobinnerien, ha ne houlenit ket a guzul digand an diouganerien, gand aon na veh saotret ganto. Me eo an Aotrou ho Toue.

32. Sao dirag eur penn gwenn, hag enor an den koz : ha douj an Aotrou da Zoue. Me eo an Aotrou.

33. Mar chom eun diavêziad en ho pro, ha mar dema en ho touez, na damallit ket anezañ :

34. Hogen bezet en ho touez evel pa ve euz ar vro, ha karit anezañ evelдох hoh-unan : rag c'hwi a zo diavêzidi hoh-unan e douar an Ejipt. Me eo an Aotrou ho Toue.

35. Na rit netra ne ve leal, nag er varn, nag er reolenn, nag er pouez, nag er goñvor.

36. Bezet reiz ar valañs, ha reiz ar poueziou, reiz ar bouezell¹¹⁵, ha reiz ar sestier¹¹⁶. Me eo an Aotrou ho Toue, en-deus ho tennet euz a zouar an Ejipt.

37. Mirit va oll gelennoù ha va oll varnedigeziou, ha sevenit o¹¹⁷. Me eo an Aotrou.

XX. Pennad.

Lezennou diwar-benn an idolatri hag ar strobinnerien, ha diwar-benn ar hlinded.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

2. An dra-mañ a liviri da vugale Izrael : kement hini euz a vugale Izrael, pe euz an diavêzidi a chom en Izrael, en-devezo roet euz e ouenn da idol Moloh, a vezo lakaet d'ar maro : pobl ar vro a labezo anezañ gand mein.

3. Ha me a lakay va dremm a-eneb an den-ze, hag e lamin anezañ euz a-greiz e bobl, o veza ma en-deus roet euz e ouenn da Voloh, ma en-deus mastaret va zantuar, ha ma en-deus saotret va ano santel.

4. Mar deu pobl ar vro dre leziregez, hag evel dre fae evid va gourhemenn, da leuskel da vond an den en-devezo roet euz e ouenn da Voloh, ha ma ne fell ket dezi e laza ;

¹¹⁵ ar bouezell : muzul (just pehini ?)

¹¹⁶ ar sestier : muzul evid ar greun.

¹¹⁷ ha sevenit o hag o zevenit, ha sevenit anezo.

5. Me a zavo droug ennon a-eneb an den-ze, hag a-eneb e dud, hag e lamin anezañ euz a-greiz e bobl, eñ hag ar re oll o-devezo aotreet eh en em hastaoufe gand Moloh.

6. Mar distro eun den diouzin evid mond da heul ar strobinnerien hag an diouganerien, ha mar deu d'en em hastaoui ganto, e savo droug ennon a-eneb dezañ, hag e lazin anezañ euz a-greiz e bobl.

7. En em zantellait ha bezit sent, rag me eo an Aotrou ho Toue.

8. Mirit va helennou, ha sevenit o. Me eo an Aotrou a zo o santellaad ahanoh.

9. Neb en-devezo droug-pedet gand e dad pe gand e vamm, a vezo lakaet d'ar maro : ra gouezo e wad warnezañ, o veza ma en-deus droug-pedet gand e dad pe gand e vamm.

10. Mar deu eur re da walla gwreg eun all, ha mar kouez en avoultriez gand gwreg e nesa, ra vezo lakaet d'ar maro hag ar gwaz hag ar vaouez avoultr.

11. Mar deu eur re da gousked gand e lezvamm, ha mar tizolo mezegez¹¹⁸ e dad, e vezint lakaet d'ar maro o-daou : ra gouezo o gwad warnezo.

12. Mar kousk eur re gand e verh-kaer, ra vezint lakaet d'ar maro o-daou, rag eun torfed braz o-deus greet ; ra gouezo o gwad warnezo.

13. Mar kousk eur re gand eur gwaz e-giz pa ve eur vaouez, o-deus greet o-daou eun torfed braz, hag e vezint lakaet d'ar maro : ra gouezo o gwad warnezo.

14. Neb a zimezo gand ar vamm, goude beza bet dimezet gand ar verh, hennez en-devezo greet eun torfed braz : ez-veo e vezo devet ganto, ha ne chomo ket eun droug ker braz en ho touez.

15. Neb a yelo da gavoud eul loen bennag a vezo lakaet d'ar maro : lazet e vezo ivez al loen.

16. Ar vaouez he-devezo kousket dindan eul loen bennag, a vezo lazet gantañ¹¹⁹ : ra gouezo o gwad warnezo.

17. Mar da eur re da gavoud e hoar, merh e dad, pe merh e vamm, ha mar gwel he mezegez, pe mar gwel-hi e vezegez-eñ ; eun torfed braz o-deus greet, hag e vezint lazet dirag ar bobl, o veza ma o-deus diskouezet o mezegez an eil d'egile ; hag i a zougo o fallagriez.

18. Mar da eur re da gavoud eur vaouez en amzer ma ema miziou ganti, ha mar dizolo he mezegez, ha mar tikouez-hi mammenn he gwad, e vezint lazet o-daou euz a-greiz o fobl.

19. Ne zizoloi ket mezegez c'hoar da vamm, na mezegez c'hoar da dad. Neb a ray kement-se, a lakay e noaz mezegez e gig e-unan : i o-daou a zougo o fallagriez.

20. Mar da eur re da gavoud gwreg e eontr, breur e dad, pe gwreg e eontr, breur e vamm, ha mar dizolo mezegez e gerent-tost, e tougint o-daou o fehed ; hag e varvint heb bugale.

21. Mar dimez eur re da wreg e vreur, e ra eun dra direiz : en noaz e laka mezegez e vreur ; hag e vezint heb bugale.

22. Mirit va lezennou ha va barnedigeziou, ha sevenit o, gand aon m'ho tistaolfe ivez an douar e tleit mond da chom.

23. Na heuillot ket lezennou ar broadou a dlean da gas kuit en ho raog. Rag an oll draou-ze o-deus greet, hag euzuz int bet dirazon.

24. Hogen setu petra a lavaran deoh : Dalhit o douar-i, a roin deoh e degouez¹²⁰, douar e pehini e tiver al lêz hag ar mel. Me eo an Aotrou ho Toue, pehini en-deus ho tennet euz a-zouez an oll boblou all.

¹¹⁸ mezegez : noazder.

¹¹⁹ gantañ : asamblez gantañ.

¹²⁰ e degouez : evel herez.

25. Rannit eta ivez c’hwi al loen glan dioh al loen dihlan, hag an evn glan dioh an evn dihlan : ha na zaotrit ket hoh eneou gand al loened, hag an evned, ha kement a fiñv war an douar, hag em-eus diskouezet deoh evel traou dihlan.

26. Sent e viot din, o veza ma on sant, me an Aotrou, ha ma em-eus ho tennet euz a-douez an oll boblou all, evid ma viot din.

27. Ar gwaz pe ar vaouez e pere e vezo eur spered Piton¹²¹, pe eur spered a ziougan, a vezo lakaet d’ar maro : labezet e vezint ; hag o gwad a gouezo warnezo.

XXI. Pennad.

Dleadou ar veleien.

1. An Aotrou a lavaras ivez da Voizez : Komz ouz beleien mibien Aaron, ha lavar dezo : N’en em zaotret ket ar beleg pa varv e genvroiz ;

2. Nemed ma ve e gerent a-ouenn, hag e gerent tosta ; da lavaroud eo, e dad hag e vamm, e vab hag e verh, e vreur ivez,

3. Hag e hoar gwerh, pehini n’eo ket bet dimezet :

4. Hogen n’en em zaotro ket, pa varvo zoken eur priñs euz e bobl.

5. Ne douzint ket o fenn, nag o baro, ha ne raint ket a drohou en o hig.

6. Sent e vezint evid o Doue, ha ne zaotrint ket e ano : rag i a ginnig ezañs d’an Aotrou, ha baraou o Doue ; ha rag-se e vezint sent.

7. Ne gemerint ket da wreg eur vaouez gwallet, nag eur hast, nag an hini a vezo bet kaset kuit gand e ozah : o veza ma int sakret d’o Doue.

8. Ha ma kinnigit ar baraou a-ginnig. Ra vezint eta sent, rag me a zo sant va-unan, me an Aotrou pehini ho laka da veza sent.

9. Mar bez kavet merh eur beleg oh ober loustoni, ha ma ra dismegañs da ano he zad, e vezo devet en tan.

10. Ar Poñtif, da lavaroud eo, ar beleg brasa e-touez e vreudeur, war penn pehini e vezo bet skuillet eoul ar sakradur, ha daouarn pehini a vezo bet sakret evid ar velegiez, hag a zo gwisket gand giwskamañchou santel, ne zizoloy ket e benn, ha ne rogo ket e zillad :

11. Ha ne day ket biken etrezeg eur horv maro ; ha n’en em zihlano ket zoken en abeg d’e dad na d’e vamm.

12. Ha ne day ket er-mêz euz al lehiou santel, gand aon na zaotrfé santuar an Aotrou, o veza ma eo bet skuillet warnezañ eoul sakradur santel e Zoue. Me eo an Aotrou.

13. Kemeroud a ray da wreg eur werhez ;

14. Ne gemero ket eun intañvez, nag eur wreg kaset kuit gand he ozah, nag eur vaouez gwallet, nag eur hast ; hogen kemeroud a ray eur plah-yaouank euz e bobl e-unan.

15. Ne vesko ket ar hef¹²² euz e ouenn gand ar re zister euz e bobl ; rag me eo an Aotrou pehini e laka da veza sant.

16. An Aotrou a gomzas c’hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

17. Lavar da Aaron : E-touez da dud mar deus eur re euz da ouenn hag en-devezo eur merk bennag war e gorr, na ginnigo ar baraou d’e Zoue.

18. Ha ne dostay ket evid ober e garg ; mar deo dall, pe gamm ; mar deo e fri pe re vihan, pe re vraz, pe dort ;

19. Mar deo torret e droad, pe e zorn ;

¹²¹ eur spered Piton : ? Marteze : eur spered douellerez.

¹²² ar hef : ar re a zo e penn.

20. Mar deo tort, pe bikouz ; mar en-deus ar banne war e lagad ; mar en-deus eur hal a-vreped, pe an diskwab war e grohenn, ma en-deus eun avelenn.

21. Kement hini euz a ouenn Aaron, ar beleg, en-devezo eur merk bennag, ne dostay ket evid kinnig ostivou d'an Aotrou, pe baraou d'e Zoue.

22. Debri a ray koulskoude euz ar baraou a zo kinniget er santuar ;`

23. Hogen en heveleb doare n'ez ay ket en diabarz euz ar ouel, ha ne dostay ket ouz an aoter, o veza ma en-deus eun namm, ha na dle ket saotra va santuar. Me eo an Aotrou a laka anezo da veza sent.

24. Moizez a lavaraz eta da Aaron, ha d'e vibien, ha da Izrael oll, kement a oa bet gourhemennet dezañ.

XXII. Pennad.

Ar re a dle debri euz an traou santel.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

2. Komz ouz Aaron hag e vibien, evid ma pellaint dioh kinnigou sakr bugale Izrael, ha na zaotrint ket va ano santel er pez a zo kinniget din. Me eo an Aotrou.

3. Lavar dezo ha d'o nested : Piou bennag euz ho kouenn, o veza eur saotr ennañ, a dostay ouz an traou sakr hag a zo bet kinniget d'an Aotrou gand bugale Izrael, a varvo dirag an Aotrou. Me eo an Aotrou.

4. Kement hini euz a ouenn Aaron a vezo lovr, pe en-devezo eur red sper, na zebro ket ar pez a zo bet gouestlet din, beteg ma vezo pareet. Neb a lakay e zorn war eun den dihannaet gand eur horv maro, pe war eur re en devezo laosket da redeg e sper,

5. Pe war eul loen-stlej, pe war eun dra bennag all dihlan, ha ne heller ket steki outañ heb beza saotret,

6. A vezo dihlan beteg ar pardaez, ha ne zebro ket euz ar pez a zo bet santellaet : hogen goude ma en-devezo gwalhet e gorv en dour,

7. Ha ma vezo kuzet an heol, neuze o veza glannaet, e tebro euz an traou santellaet, o veza ma eo e voued.

8. Ne zebrint ket euz a eul loen maro anezañ e-unan, nag euz an hini a vezo bet paket gand eul loen all ; ha n'en em zaotrint ket enno. Me eo an Aotrou.

9. Ra virint va helennou, evid na gouezint ket er pehed ha na varvint ket er santuar, goude ma o-devezo e zaotret. Me eo an Aotrou a laka anezo da veza sent.

10. Kement den a-ziavêz ne zebro ket euz an traou santellaet : an diavêziad a chom gand ar beleg hag e hopraer ne zebrint ket anezo.

11. Hogen an hini a vezo bet prenet gand ar beleg, hag an hini a vezo ganet en e di, ar re-ze a zebro euz anezo.

12. Mar timez merh eur beleg gand eur re euz ar bobl, ne zebro ket euz an traou a zo bet santellaet, nag euz ar previdi.

13. Hogen mar deo intañvez, pe kaset kuit gand heh ozah, hag heb bugale, ha mar distro da di he zad, evel ma oa boazet pa oa plah-yaouank. Diavêziad ebed ne hell debri euz an traou-ze.

14. Neb en-devezo debret heb gouzoud euz an traou santellaet, a lakay eur bempved lodenn ohpenn ar pez en-deus debret, hag e roio anezañ d'ar beleg evid ar santuar.

15. Ne zaotro den ar pez a zo bet santellaet ha kinniget d'an Aotrou gand bugale Izrael.

16. Gand aon na zougfent fallagriez o fehed, o tebri euz an traou santellaet. Me eo an Aotrou a laka anezo da veza sent.

17. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

18. Komz ouz Aaron, ouz e vibien, hag ouz oll vugale Izrael, ha lavar dezo : Piou bennag euz a di Izrael, pe euz an diavêzidi a chom en ho touez, en-devezo kinniget e ro, pe o seveni e ouestl, pe o kinniga euz e youl-vad kement a ginnig d'an Aotrou e sakrifis-losk,

19. Evid beza benniget ganeoh, e vezo red e ve eur par dinamm euz e ejenned, euz e zeñved, hag euz a hevr.

20. Ma en-deus eun namm, ne ginnigo ket anezañ, ha ne hello ket beza kavet mad d'an Aotrou.

21. Piou bennag a ginnigo d'an Aotrou eur viktim a beoh pe o seveni e ouestl, pe o kinnig euz e youl, pe eun ejenn, pe eun dañvad, e kinnigo anezañ dinamm, evid ma vezo kavet mad : ne vezo namm ebed ennañ.

22. Mar deo fall, pe mahagn, pe kleizennet, pe klogorennet, pe galuzet, pe farsillet, ne ginnigot ket anezañ d'an Aotrou, ha ne zevot ket anezañ war an aoter.

23. Bez' e hellit kinnig a-youl eun ejenn, pe eun dañvad, goude beza trohet e skouarn hag e lost ; hogen ne heller ket seveni eur gouestl ganto.

24. Ne ginnigot ket d'an Aotrou loen ebed friket, pe brevet, pe trohet, pe diframmet e gellou dezañ ; biken ne reot kement-se en ho pro.

25. Ne ginnigot ket d'ho Toue baraou euz a zorn eun diavêziad, na netra all euz a gement a fellfe dezañ da rei ; rag dihlan ha saotret int oll : n'o degemerot ket.

26. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

27. Pa vezo ganet eun ejenn, pe eun oan, pe eur havr, e chomo seiz devez da zena e vamm : hogen d'an eizved deiz ha d'an deziou goude e hellint beza kinniget d'an Aotrou.

28. Mar deo eur vuoh, pe eun dañvadez, ne vezint ket lazet en eun deiz gand o re vihan.

29. Ma lazit eun ostiv evid trugarekaad an Aotrou, evid ma vezo trugarezuz en ho keñver,

30. E tebrot anezi en heveleb deiz, ha ne chomo netra anezi beteg ar mintin euz an deiz all. Me eo an Aotrou.

31. Mirit va gourhemennou, ha sevenit o. Me eo an Aotrou.

32. Ne zaotrit ket va ano santel, evid ma vezin santellaet e-touez bugale Izrael. Me eo an Aotrou ho laka da veza sent,

33. Hag en-deus ho tennet euz a zouar an Ejipt, evid ma vijen da Zoue deoh. Me eo an Aotrou.

XXXIII. Pennad.

Goueliou an Aotrou.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

2. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Ar re-mañ eo goueliou an Aotrou, a halvot santel.

3. E-pad c'hweh devez e labourot : ar seizved deiz, o veza ma eo ehan ar sabat, e vezo anvet santel : ne reot labour ebed e-pad an deiz-se. Sabat an Aotrou en hoh oll diegeziou.

4. Ar re-mañ eo eta goueliou santel an Aotrou, a dleit da lida en o amzer.

5. Er miz kenta, d'ar pevarzegved deuz euz ar miz dioh ar pardaez, eo Pask an Aotrou.
6. Ha d'ar pemzegved deiz euz ar miz-se, eo lid bara dihoell an Aotrou. E-pad seiz devez e tebrot bara dihoell.
7. An deiz kenta a vezo liduz-braz ha santel deoh ; ne reot labour a gorr ebed e-pad an deiz-se.
8. Hogen kinnig a reot d'an Aotrou eur sakrifis-losk e-pad seiz devez ; hag ar seizved devez a vezo lidusoh ha santelloh : ha ne reot labour a gorr ebed en deiz-se.
9. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
10. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Pa viot eet en douar a roin deoh, ha pa ho-pezo medet hoh edou, e tougot eur malan tamouezennou d'ar beleg, evel ar henta frouez euz ho mederez :
11. Hag hemañ, antronoz ar sabat, a zavo ar malan dirag an Aotrou, evid ma vezo trugarezuz en ho keñver, hag e santello anezañ.
12. Ha d'an heveleb deiz ma vezo gouestlet ar malan, e vezo lazet e sakrifis-losk d'an Aotrou eun oan bloaz hag eñ dinamm.
13. Evid braoued kinnig e vezo roet gand an oan daou zegved bleud glebiet gand eoul, evel eun ezañs a hwez-vad d'an Aotrou : hag evid gwin-kinnig, ar bevare lodenn euz a eun hin¹²³.
14. Ne zebrot na bara, na bleud krazet, na yod greet gand an ed nevez, ken na vezo deuet an deiz e pehini ho-pezo kinniget euz anezañ d'ho Toue. Al lezenn-ze a vezo miret da viken a rumm da rumm hag en oll vroiou.
15. Niveri a reot eta adaleg an eil devez euz ar sabat, e pehini hoh-eus kinniget malan ar henta frouez, seiz sizun hed-da-hed,
16. Beteg antronoz ar seizved sizun, da lavaroud eo, hanter-kant devez ; hag evel-se e kinniget d'an Aotrou, evel eur sakrifis nevez,
17. Euz an oll lehiou e pere e chomot, daou vara a brevidi, euz a zegved bleud goell, a lakeot da boaza evid previdiou d'an Aotrou :
18. Hag e kinniget gand ar baraou seiz oan bloaz hag i dinamm, hag eul leue euz an tropell, ha daou dourh ; hag i a vezo kinniget e sakrifis-losk, gand o braoued kinnig, evel eun dra a hwez-vad d'an Aotrou.
19. Kinnig a reot ivez eur bouh evid ar pehed, ha daou oan bloaz evel ostivou a beoh.
20. Ha pa en-devezo ar beleg o zavet dirag an Aotrou gand baraou ar previdi, e kouezint en e gerz.
21. An deiz-se e halvot liduz-braz ha santel-braz : ne reot labour a gorr ebed ennañ. Al lezenn-mañ a vezo miret da viken en hoh oll vroiou hag en ho kouenn hokoude.
22. Hogen pa vedot edou ho touar, ne drohot ket anezo beteg ar zol ; ha ne zastummot ket an tamouezennou a vezo chomet a-zilerh ; hogen o lezel a reot evid ar beorien hag evid an diavêzidi. Ha me eo an Aotrou, ho Toue.
23. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
24. Lavar da vugale Izrael : Er seizved miz, d'ar henta deiz euz ar miz, e lidot ar sabat gand an trompillou, e koun euz ar zon anezo ; hag an deiz-se a vezo galvet santel.
25. Ne reot labour a gorr ebed en deiz-se, hag e kinniget eur sakrifis-losk d'an Aotrou.
26. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

¹²³ eun hin : eur muzul.

27. An degved deiz euz ar seizved miz-se, a vezo an deiz a zihaoudigez brudet-braz, hag e vezo galvet santel : en deiz-se e hlaharot hoh eneoù, hag e kinnigot eur sakrifis-losk d'an Aotrou.

28. Ne reot labour ebed a gorr a-hed an oll zeiz-se : o veza ma'z eo eun deiz a zihaoudigez, ha m'ho tihaouo an Aotrou ho Toue.

29. Kement den ha n'en em hlaharo ket en deiz-se, a varvo euz a-greiz e bobl.

30. Ha kement hini a ray eul labour bennag a gorr, e laz in anezañ euz a-greiz e bobl.

31. Ne reot eta labour ebed en deiz-se : al lezenn-ze a vezo miret da viken en ho kouenn, hag en hoh oll vroioù.

32. Sabat an ehan eo ; hag e vezo glaharet hoh eneoù en naved deiz euz ar miz. Ho sabatoù a lidot euz a eur pardaez da eur pardaez all.

33. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

34. Lavar da vugale Izrael : Adaleg ar pemzegved deiz euz ar seizved miz-se, e vezo gouel an tabarneklou d'an Aotrou e-pad seiz devez.

35. An deiz kenta a vezo brudet-braz ha santel-braz : ne reot labour a gorr ebed a-hed an deiz-se.

36. E-pad seiz devez e kinnigot sakrifisou-losk d'an Aotrou : an eizved deiz a vezo ivez brudet-braz ha santel-braz, hag e kinnigot eur sakrifis-losk d'an Aotrou, rag deiz ar stroll eo : ne reot labour a gorr ebed en deiz-se.

37. Ar re-ze eo gouelioù an Aotrou, a halvot brudet-braz ha santel-braz ; hag e kinnigot enno d'an Aotrou gouestlou, sakrifisou-losk ha braoued kinnigoù, hervez lid peb deiz,

38. Ohpenn sabatoù all an Aotrou, ho roou, hag ar pez a ginnigot a ouestl pe a youl d'an Aotrou,

39. Adaleg eta ar pemzegved deiz euz ar seizved miz, pa ho-pezo dastumet oll frouez ho touar, e lidot gouel an Aotrou e-pad seiz devez : an deiz kenta hag an eizved deiz a vezo deizioù santel, da lavaroud eo, deizioù ehan.

40. D'an deiz kenta e kemerot evidoh frouez euz ar wezenn ar gaerra ha skoulmou palmez, ha barraouigoù ar wezenn a zo stank he delioù, hag haleg ar froud, hag en em laouennaot dirag an Aotrou ho Toue.

41. Ha lida a reot beb bloaz ar gouel-ze e-pad seiz devez : kement hini a zo euz a ouenn Izrael a chomo dindan an teltou,

42. Hag e chomot e disheol ar skourrou e-pad seiz devez : kement hini a zo euz a ouenn Izrael a chomo dindan an teltou.

43. Evid ma tesko ho tud ho-koude penaoz em-eus lakaet bugale Izrael da chom dindan an teltou, pa em-eus o zennet euz a zouar an Ejipt. Me eo an Aotrou ho Toue.

44. Ha Moizez a gomzas evel-se ouz bugale Izrael diwar-benn gouelioù an Aotrou.

XXIV. Pennad.

Lezennou diwar-benn ar hleuzeurioù, an douerien Doue, etc...

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

2. Gourhemenn da vugale Izrael ma tegasint dit eoul olivez ar glanna, hag ar skedusa, evid lakaad da zeñ er hleuzeurioù e peb amzer,

3. Er-mêz euz a ouel an testeni, e tabernakl ar gevredigez. Aaron o lakay adaleg ar pardaez beteg ar mintin dirag an Aotrou, dioh eul lid a-vepred en ho kouenn.

4. Lakaet e vezint bepred war eur hantoler glan-braz dirag an Aotrou.
5. Kemeroud a ri ivez bleud glan, hag e poazi anezañ daouzeg bara, pere a vezo pep hini euz a zaou zegved¹²⁴ bleud.
6. Hag e liki warnezo c'hweh a bep tu war an daol glan-braz dirag an Aotrou.
7. Hag e liki warnezo ezañs luhuz-braz, evid ma vezo ar bara evel eur houn euz ar hinnig greet d'an Aotrou.
8. Da beb deiz sabbat e vezo nevezet ar baraou-ze dirag an Aotrou, goude ma vezint bet roet gand bugale Izrael evel eur gevredigez peurbaduz.
9. Hag i a vezo da Aaron ha d'e vibien, evid o debri el leh santel ; o veza ma int santel-braz, ha gouestlet d'an Aotrou dre eur gwir peurbaduz.
10. E-keit-se mab eur wreg euz a Izrael, pehini he-doa bet euz a eun den euz an Ejipt e-touez bugale Izrael, en em rendaelas er hamp gand eun den euz a Izrael.
11. Ha pa en-doe droug-komzet ouz ano an Aotrou, ha ma en-doe e villiget, e oe degaset da Voizez (hogen e vamm a oa anvet Salumit, hag a oa merh da Zabri euz a vreuriezh Dan).
12. Hag e oe kaset er vah, beteg ma vije gouezet petra a hourhemenne an Aotrou.
13. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
14. Kas an droug-komzer er-mêz euz ar hamp ; ha ra lakay kement hini en-deus e glevet, e zaouarn war e benn, ha ra vezo labezet gand an oll bobl.
15. Hag e liviri da vugale Izrael : Piou bennag a zroug-pedo gand e Zoue a zougo e behed.
16. Ha neb a zoug-komzo euz a ano an Aotrou, ra vezo lakaet d'ar maro : ar bobl oll a labezo anezañ, daoust ma eo deuz ar vro, pe mar deo a-ziavêz bro. Neb a zroug-komzo euz a ano an Aotrou, ra vezo lakaet d'ar maro.
17. Neb en-devezo skoet gand eun den, hag en-devezo e lazet, ra vezo lakaet d'ar maro.
18. Neb en-devezo skoet gand eul loen, hag e lazet, a roy eun all evitañ, da lavaroud eo, loen evid loen.
19. Neb en-devezo gloazet unan bennag euz e genvroiz ; evel ma en-deus greet, ra vezo greet dezañ.
20. Torr evid torr, lagad evid lagad, dant evid dant a roy. An heveleb gloaz en-devezo greet, a vezo red dezañ da houzañv.
21. Neb en-devezo lazet eul loen-samm, a roy eun all. Neb en-devezo lazet eun den, a vezo lazet.
22. Ra vezo unvan ar varn etrezoh, daoust pe eun den euz ar vro, pe eun diavêziad eo en-devezo pehet : rag me eo an Aotrou ho Toue.
23. Moizez a gomzas evel-se ouz bugale Izrael ; hag i a gasas an hini en-doa droug-komzet er-mêz euz ar hamp, hag hel labezjont. Ha bugale Izrael a reas evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.

XXV. Pennad.

Ehan ar seizved bloaz. Ar Jubile. Diwar-benn an uzurerien hag ar sklaved.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez war menez Sinai, o lavaroud :
2. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Pa viot eet en douar a roin deoh, e viot sabbat an Aotrou.

¹²⁴ euz a zaou zegved : a ziou zegvedenn.

3. E-pad c'hweh vloaz eh hadi da bark, hag e-pad c'hweh vloaz e trohi da winienn, hag e tastumi he frouez.
4. Hogen er seizved bloaz e vezo sabat an douar, pe ehan an Aotrou : ne hadi ket da bark, ha ne drohi ket da winienn.
5. Ne vedi ket ar pezh a roy an douar anezañ e-unan : ha ne zastumi ket bodourezin da brevidi, evel pa ve an eost rezin ; rag bloaz-ehan an douar eo ;
6. Hogen da voued e vezint deoh, dit, ha d'az mevel, ha d'az plah, ha d'az kopr-devezour, ha d'an diavêziad a chom ganez.
7. Kement a ziwano anezañ e-unan a vezo ivez da voued d'az loened-samm ha d'az loened all.
8. Niveri a ri ivez seiz sizun a vloaziu, da lavaroud eo, seiz gwech seiz ; pere a ra en oll nao bloaz ha daou-ugent :
9. Hag en degved deiz euz ar seizved miz, a zo an amzer euz an dihaouidigez, e lakeot da zeni an drompill en hoh oll zouar.
10. Santellaad a ri an hanter-kantved bloaz, hag e halvi an diskarg war ar re oll a chomo en da zouar : rag bloaz ar Jubile eo. Peb den a zistroy d'e vadou kent, ha pep hini a zistroy d'e genta tud.
11. Rag ar Jubile eo hag an hanter-kantved bloaz. Ne hadot ket, ne vedot ket ar pezh en-devezo roet an douar e-unan, ha ne zastumot ket previdi an eost rezin,
12. Evid santellaad ar Jubile ; hogen debri a reot raktal ar pezh a gavfot er parkou.
13. E bloaz ar Jubile an oll a zistroy d'o madou kent.
14. Pa werzi eun dra d'az proad, pe pa breni eun dra diganti, na hlahar ket da vreur ; hogen pren digantañ hervez an niver euz a vloaveziou ar Jubile.
15. Hag eñ a werzo dit hervez ar pred da zastumi ar frouez :
16. Seul vui e chomo a vloaveziou goude ar Jubile, seul vrasoh e vezo ar priz ; ha seul nebeutoh e chomo a amzer, seul nebeutoh e kousto ar pezh a brener ; rag gwerza a ray dit hervez ar pred da zastum ar frouez.
17. Na hlaharit ket ho kenvreudeur ; hogen doujet pep hini e Zoue : rag me eo an Aotrou ho Toue.
18. Grit va helennou, ha mirit va barnedigeziou, ha sevenit o, evid ma hellot chom war an douar hep spont,
19. Ha ma roy an douar deoh e frouez, gand pere e hellot en em vaga ha kaoud ho kwalh anezo, hep kaoud aon rag diboell ebed.
20. Ma livirit : Petra a zebrim-ni er seizved bloaz, ma n'on-eus ket hadet, ha ma n'on-eus ket dastumet or frouez ?
21. Me a roy va bennoz deoh er c'hwehved bloaz, rag hi a zougo deoh frouez tri bloaz.
22. En eizved bloaz eh hadot, hag e tebrot ar frouez koz beteg an naved bloaz : ken na zavo ar frouez nevez, e tebrot ar frouez koz.
23. Ne vezo ket gwerzet an douar da viken : rag din eo ; ha c'hwi, diavêzidi, n'oh nemed va mesaerien.
24. Dre ze ar madou douareg a vezo deoh a vezo gwerzet dindan diviz a zaspren.
25. Mar deo deuet da vreur da veza paour, ha mar gwerz lod euz e dra ; mar fell d'e gar nesa, e hello daspren ar pezh en-devezo gwerzet.
26. Mar n'en-deus a gar nez, hogen mar gell e-unan kavoud peadra da zaspren e dra,
27. E vezo niveret bloaveziou ar frouez abaoe ma en-deus gwerzet ; hag o tisteurel an dilerh d'ar prener, e tistroy evel-se en e dra.

28. Ma ne hell ket kavoud peadra evid disteurel ar priz euz e dra, ar prener a viro ar pezh en-deus prenet, beteg bloaz ar Jubile. Hag er bloaz-se, kement mad gwerzet a zistroy d'e aotrou ha d'e berhenn kent.

29. Neb en-devezo gwerzet eun ti en diabarvez euz a vuriou eur gêr, a hello e zasprena e-pad eur bloaz hed-da-hed.

30. Ma n'hen daspren ket, ha mar deo tremenet eur bloaz hed-da-hed, ar prener a vezo e berhenn, hag e dud da houde da viken ; ha ne vezo ket gellet e zasprena, er Jubile zoken.

31. Ma ema an ti en eur gêrig divur, e vezo gwerzet diouh gwir ar parkeier : ma n'eo ket bet dasprenet kentoh, e tistroy d'e aotrou e bloaz ar Jubile.

32. Tiez al Levited a zo er hêriou, a hell beza dasprenet e peb amzer.

33. Ma n'int ket bet dasprenet, e tistroint d'o ferhenn e bloaz ar Jubile, rag tiez al Levited er hêriou a zo o zra e-touez bugale Izrael.

34. Hogen an tiez o-devezo war harzou kêr ne vezint ket gwerzet, rag eur gerz peurbaduz eo dezo.

35. Mar deo deuet paour da vreur, ha mar deo mahagn e zorn, ha ma eh-eus e zegemeret evel eun diavêziad hag eun ergerzer, ha ma en-deus bevet ganez,

36. Na gemer ket a gampi dioutañ, nag ohpenn eged n'eh-eus roet. Douj da Zoue, evid ma hello da vreur beva en da di.

37. Ne roi ket da arhant dezañ war gampi, ha ne houlenni ket digantañ muiou a voued eged n'az-pezo roet dezañ.

38. Me eo an Aotrou ho Toue, pehini en-deus ho tennet euz a zouar an Ejipt, evid rei deoh douar Kanaan, hag evid beza ho Toue.

39. Mar deo kouezet da vreur er baourentez, ha mar deo en em werzet dit, ne waski ket anezañ gand gwazoniez ar sklaved ;

40. Hogen evel eur gopr-devezour hag eur merer e vezo : beteg bloaz ar Jubile e labourou en da di ;

41. Goude-ze ez ay kuit gand e vugale, hag e tistroio etrezeg e dud, hag e madou e dadou :

42. Rag va sklaved int, ha me eo em-eus o zennet euz a zouar an Ejipt. Dre ze ne werzot ket anezo evel ar sklaved all.

43. Na wask ket da vreur gand da halloud ; hogen douj da Zoue.

44. Ho-pezet sklaved ha sklavezed euz a-douez ar broadou a zo war ho tro.

45. Bez' ho-pezo ivez evid sklaved an diavêzidi a zo deuet en ho touez, pe ar re a zo ganet anezo en ho pro.

46. Ha rei a reot gand eur gwir a zegouez d'ho pugale en ho-koude, hag o ferhenn e viot da viken : hogen ne waskot ket gand ho kalloud ho preudeur, bugale Izrael.

47. Mar deu eun diavêziad pe eun ergerzer da binvidikaad en ho pro gand e labour, ha mar deu unan euz ho preudeur da baourraad, ha d'en em werza dezañ, pe da unan euz e dud,

48. Goude ma vezo bet gwerzet, e hell hemañ beza dasprenet. An hini euz e vreudeur a fello dezañ e zasprena, e zaspreno ;

49. He eontr, pe e genderv, e har pe e nez. Hogen ma hell e-unan en em zasprena, en em zaspreno ;

50. Goude beza niveret ar bloaveziou adaleg an amzer euz e werzidigez beteg bloaz ar Jubile : ha goude beza tennet an arhant evid pehini e oa en em werzet, diouh an niver euz ar bloaveziou, ha gopr eur gopr-devezour.

51. Mar chom c'hoaz kalz a vloaveziou beteg ar Jubile, e tistaolo ivez muiou a arhant :

52. Ma ez eus nebeud a vloaveziou, e ray e gont gand e vestr dioh an niver a vloaveziou, hag e tistaolo d'e brener dioh ar bloaveziou a chom,

53. Goude beza tennet ar gopr a vezo dleet dezañ evid an amzer ma en-devezo servijet. Ne wasko ket e vestr anezañ gand diboell dirazout.

54. Ma ne hell ket beza dasprenet en doare-ze, ez ay kuit e bloaz ar Jubile gand e vugale.

55. Rag bugale Izrael a zo va sklaved, pere em-eus tennet euz a zouar an Ejipt.

XXVI. Pennad.

Bennoz d'ar re a viro kelennou Doue, ha malloz d'ar re o zorro.

1. Me eo an Aotrou ho Toue : ne reot ket a idol evidoh, na skeudennou ; ne zavot ket a beuliou, ha ne lakaot ket a vên aroueziuz en ho touar, evid e azeuli. Rag me eo an Aotrou ho Toue.

2. Mirit va deziou sabbat, ha krenit dirag ar santuar. Me eo an Aotrou.

3. Mar kerzit em helennou, mar mirit va gourhemennou, ha ma o zevenit, e roin deoh glaoeier en o amzer.

4. An douar a zougo e eginou, hag ar gwez a vezo leun a frouez.

5. Dornerez an edou a dizo an eost rezin, hag an eost rezin a vezo tizet gand amzer an haderez : ho para a zebrot hag ho-pezo ho kwallh, hag heb aon ebed e chomot en ho touar.

6. Ar peoh a roin en hoh harzou : kousk a reot, ha ne viot spontet gand den. Ar gwall loened a bellain diouzoh ; ha kleze an enebourien ne dremeno ket dre hoh harzou.

7. War-lerh hoh enebourien ez eot, hag e vezint diskaret stank dirazoh.

8. Pemp ahanoh a yelo war-lerh kant divêziad, ha kant ahanoh war-lerh deg mil : hoh enebourien a gouezo gand ar hleze dirazoh.

9. Me a zello ouzoh hag ho lakay da greski : paota a reot, ha me a gretay va hevredigez ganeoh.

10. Ar frouez koz-braz a zebrot, ha pa zeuy a-fonn ar frouez nevez, e taolot ar frouez koz.

11. Lakaad a rin va zavernakl en ho kreiz, ha va halon ne zistaolo ket ahanoh.

12. Me a valeo en ho touez, hag a vezo ho Toue, ha c'hwi a vezo va fobl.

13. Me eo an Aotrou ho Toue, pehini en-deus ho tennet euz a zouar an Ejipt, evid na vijeh da sklaved dezo, hag en-deus torret chadennou ho kouzougou, evid ho lakaad da gerzoud sonn.

14. Ma ne zelaouit ket ahanon, ha ma ne zevenit ket va oll hourhemennou,

15. Mar grit fae war va lezennou, ha mar disprizit va barnedigeziou, mar ne rit ket ar pez em-eus gourhemennet deoh, ha mar torrit va hevredigez ;

16. Setu ivez petra a rin deoh : dond a rin buan d'ho kweloud gand an dienez, ha gand ar wrez a zizeho ho taoulagad, hag a goazo ho puhez. En aner eo eh hadot ed, rag hoh enebourien a wasto anezañ.

17. Lakaad a rin droug da zavel ennon en hoh eneb, ha c'hwi a vezo diskaret dirag hoh enebourien ; ha c'hwi a blego dindan ar re ho kasay : tehoud a reot, heb ma ve den war ho lerh.

18. Goude-ze ma ne zentit ket ouzin, e kreskin seiz gwech ho kastiz, en abeg d'ho pehejou.

19. Hag e vrevin ho kalon balh ha kaled. Lakaad a rin an neñv da veza evel houarn deoh, hag an douar evel arm.

20. Ho labour a vezo dihounid, an douar ne roy ket a ed deoh, nag ar gwez a frouez.
21. Mar kerzit c'hoaz a-eneb din, ha ma ne fell ket deoh va zelaou, me a gresko ho kouliou seiz gwech ohpenn en abeg d'ho pehejou.
22. Kas a rin en hoh eneb loened fero, pere a dago ahanoh hag ho chatal, hag ho lakay oll da nebeud : hag hoh heñchou a zeuy evel distroiu.
23. Goude-ze ma ne fell ket deoh mond war wellaad, ha mar kerzit bepred em eneb,
24. E kerzin ivez me en hoh eneb, hag e skoin ganeoh seiz gwech muioh en abeg d'ho pehejou ;
25. Hag e tegasin warnoh ar hleze a veñjo va hevredigez : ha pa en em dennot er hêriou e kasin ar vosen en ho touez hag e viot lakaet etre daouarn hoh enebourien,
26. Goude m'am-bezo torret ho paz, me 'lavar ho para, en heveleb doare ma poazo deg gwreg bara en eur forn hepken, hag e roint anezañ dioh ar pouez : ha c'hwi a zebro, ha n'ho-pezo ket ho kwalh.
27. Goude-ze ma ne zelaouit ket ahanon, ha mar kerzit c'hoaz a-eneb din ;
28. Me a gerzo ivez en hoh eneb gand eun heveleb kounnar, me ho kastizo gand seiz gouli en abeg d'ho pehejou ;
29. En heveleb doare ma tebrot kig ho mibien hag ho merhed,
30. Diskara a rin ho lehiou uhel, hag e torrin ho skeudennou. Koueza a reot e-kreiz an diskar euz hoh idolou, ha va ene a argarzo ahanoh. ;
31. En heveleb doare ma lakain ho kêriou evel eun distro, ha n'ez ay den en ho santuariou, ha na zegemerin mui c'hwez-vad ar sakrifisou.
32. Gwasta a rin ho touar, hag hoh enebourien a vezo souezet diwar e benn, pa vezint deuet da chom ennañ.
33. Me ho skigno e-touez ar broadou, hag a denno ar hleze war ho lerh ; ho touar a vezo dilezet hag ho kêriou a vezo dismantret.
34. Neuze an douar en-devezo e zeiziu sabat e-pad an oll zeiziu ma vezo goullo.
35. E-pad ma viot e douar an enebourien, e ray e zabat, hag eh ehano pa vezo lezet e-unan, o veza n'eo ket bet ehanet en ho teiziu sabat, pa chomeh ennañ.
36. Ar re ahanoh a chomo, e skoin o halon gand spont e broiou o enebourien : trouz eun delienn war-nij o lakay da grenna, hag e tehint evel rag eur hleze : koueza a raint, heb ma ve den war o lerh.
37. Pep hini anezo a gouezo war e vreudeur, evel pa dehfont dioh ar brezel : hini ahanoh ne gredo ober penn d'o enebourien.
38. Mervel a reot e-touez ar broadou, hag e varvot e douar hoh enebourien.
39. Mar chom c'hoaz eur re bennag anezo, e tizehint en o fallagriezou e douar o enebourien, hag e vezint glaharet en abeg da behejou o zadou ha d'o re o-unan.
40. Ken na govesaint o fallagriezou ha re o zadou, dre bere o-deus torret va lezennou, hag o-deus kerzet a-eneb din.
41. Ha me ivez a gerzo en o eneb, hag e kasin anezo e douar o enebourien, beteg ma ruzio o halon diemwadet : neuze e pedint evid o fallagriezou.
42. Soñj em-bezo euz va hevredigez gand Jakob, gand Izaak, ha gand Abraham : soñj em-bezo ivez euz an douar,
43. Pehini, goude beza bet dilezet ganto, en em blijo en e zeiziu sabat, o houzañv an dizarempred en abeg dezo : hogen i a bedo neuze ahanon evid o fehejou, o veza ma o-devezo distaoulet va barnedigeziou, ha disprizet va lezennou.

44. Ha koulskoude e-pad ma edont e douar o enebourien, n'em-eus ket o distaolet krenn, ha n'em-eus ket o disprizet beteg o dizeria, ha lakaad da veza gwan ar gevredigez em-eus greet ganto. Rag me eo an Aotrou, o Doue.

45. Ha me em-bezo soñj euz va hevredigez koz, pa em-eus o zennet euz a zouar an Ejipt dirag ar broadou, evid ma vijen o Doue. Me eo an Aotrou. Setu ar barnedigeziou, hag ar helennoù, hag al lezennou en-deus roet an Aotrou etre eñ ha bugale Izrael, war menez Sinai, dre zorn Moizez.

XXVII. Pennad.

Lezennou diwar-benn ar gouestlou.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
2. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : D'an den en-devezo greet eur gouestl, hag en-devezo roet e vuhez da Zoue, e roi ar priz-mañ, hervez ma vezo prizet.
3. Mar deo eur gwaz adaleg an ugentved bloaz beteg an tri-ugentved, e roi hanter-kant sikl arhant hervez ment ar santuar :
4. Mar deo eur vaouez, e roi tregont.
5. Adaleg pemp bloaz beteg ugent, eur paotr a roy ugent sikl ; hag eur plah deg.
6. Adaleg eur miz beteg pemp bloaz, e vezo roet pemp sikl evid eur paotr, ha tri evid eur plah.
7. Adaleg tri-ugent vloaz hag ohpenn, eur gwaz a roy pemzeg sikl ; hag eur vaouez deg.
8. Mar deo eur paour, ha ma ne hell ket paea hervez ma'z eo prizet, ez ay dirag ar beleg hag e roy diouz ma prizo ar beleg, ha diouz ma hello paea.
9. Mar gouestl eur re eun aneval, hag a hell beza lazet evid an Aotrou, e vezo santel an aneval.
10. Ha ne vezo ket gellet e gemma, da lavaroud eo, rei unan gwelloc'h evid unan fall, nag unan falloù evid unan mad : mar bez kemmet, an aneval a vezo bet kemmet, hag an hini evid pehini e vezo bet kemmet, a vezo gouestlet d'an Aotrou.
11. Mar gouestl eur re eun aneval dihlan, ha na hell ket beza lazet evid an Aotrou, e vezo kaset an aneval dirag ar beleg,
12. Pehini a varno mar deo mad pe fall ; hag a lakay e briz dezañ.
13. Mar fell d'an hini en-deus e ginniget e zaspren, e lakay eur bempved lodenn dreist ar priz a vezo bet greet anezañ.
14. Mar kinnig eur re e di, ha ma e ouestl d'an Aotrou, ar beleg a evesay mar deo mad pe fall, ha dioc'h ar priz a vezo lakaet gantañ, e vezo gwerzet.
15. Hogen mar fell d'an hini en-deus e ginniget e zasprena, e lakay eur bempved lodenn dreist ar priz a vezo bet greet anezañ, hag en-devezo an ti.
16. Mar kinnig ha mar gouestl d'an Aotrou ar park a zo e dra, hervez ment an haderez e vo prizet : mar bez hadet an douar gand tregont puñs¹²⁵ heiz, e vezo gwerzet hanter-kant sikl arhant.
17. Mar gouestl e bark adaleg derou bloaz ar Jubile, e vezo prizet kement ha ma talvezo.
18. Hogen ma e ouestl nebeud amzer goude, ar beleg a nivero an arhant, hervez niver ar bloaveziou a chom beteg ar Jubile, hag e tenno anezañ euz ar priz.

¹²⁵ puñs : omer.

19. Mar fell d'an hini en-deus kinniget ar park, e zasprena, e lakay eur bempved lodenn dreist priz a oa bet greet anezañ, hag e vezo ar park dezañ adarre.
20. Hogen ma ne fell ket dezañ e zasprena, ha mar deo bet gwerzet da eun all, an hini en-deus e ouestlet ne hello mui e zasprena.
21. Rag pe vezo deuet deiz ar Jubile, e vezo santel d'an Aotrou, dre ma'z eo eun dra a zo bet gouestlet hag a zo gwir ar veleien.
22. Hogen mar deo bet prenet ar park a zo gouestlet d'an Aotrou, ha ma n'eo ket deuet euz a vadou an tadou-koz,
23. Ar beleg a nivero an dalvoudegez beteg ar Jubile, hag eñ a roy d'an Aotrou ar pezh en-doa gouestlet.
24. Hogen e bloaz ar Jubile, e tistroy d'ar perhenn kent, pehini en-doa e werzet, pe en-doa e bet en e gerz diou an darvoud.
25. Kement priz a vezo greet hervez pouez sikl ar santuar. Ugent obolenn a dalv ar sikl.
26. Ne hello den santellaad na gouestla ar re genta-ganet, pere a zo d'an Aotrou ; rag mar deo eun ejenn pe eun dañvad, eo d'an Aotrou.
27. Mar deo dihlan an aneval, neb en-deus e ginniget e zaspreno hervez e briz, hag e lakay eur bempved lodenn dreist ar priz : ma ne fell ket dezañ e zasprena, e vezo gwerzet da eun all diou ma ez-pezo e brizet.
28. Kement a zo gouestlet d'an Aotrou, daoust pe eun den eo, pe eun aneval, pe eur park, ne vezo ket gwerzet, ha ne hello ket beza dasprenet. Kement a vezo bet gouestlet eur wech, a vezo santel-braz d'an Aotrou.
29. Kement gouestl a vezo bet kinniget gand eun den, ne vezo ket dasprenet ; hogen lakaet e vezo d'ar maro.
30. Oll zeogou an douar, daoust pe euz an edou, daoust pe euz a frouez ar gwez, a zo d'an Aotrou, hag a zo gouestlet dezañ.
31. Hogen mar fell da eur re dasprena e zeogou, e lakay eur bempved lodenn dreist ar priz.
32. Peb degvedenn euz an ejenned, euz an deñved, euz ar gevr, hag euz a gement a dremen dindan gwialenn ar mesaer, a vezo gouestlet d'an Aotrou.
33. Ne vezo ket dilennet unan mad nag unan fall, ha ne vezo ket kemmet unan evid egile : mar kemm eur re unan, an hini a zo kemmet, hag an hini evid pehini e vezo bet kemmet, a vezo gouestlet d'an Aotrou, ha ne vezo ket dasprenet.
34. Setu ar gourhemennou en-deus roet an Aotrou da Voizez evid bugale Izrael, war menez Sinai.

An niverou.

I.Pennad.

Nivererez an Izraelited. Kargou al Levited.

1. An Aotrou a gomzas ouz Moizez e distro ar Sinai, euz a dabernakl ar gevredigez, ar henta deiz euz an eil miz, euz an eil bloaz, goude ma oa deuet bugale Izrael er-mêz euz an Ejipt, hag e lavaras :

2. Grit eun nivererez euz an oll strollad euz a vugale Izrael, dioh o herentiezou, hag o ziez, hag o anoioù, hag euz ar wazed hepken,

3. Adaleg ugent vloaz hag ohpenn, euz ar re greñv euz a Izrael, hag e niverot anezo dioh o strolladou, te hag Aaron.

4. Hag ar re a zo priñsed o breuriezou hag o ziez, e-touez o zud, a vezo ganeoh.

5. Setu o anoioù : Euz a vreuriez Ruben, Elisur, mab Sedeut ;

6. Euz a vreuriez Simeon, Salamiel, mab Surisaddai ;

7. Euz a vreuriez Juda, Nahason, mab Aminadab ;

8. Euz a vreuriez Isakar, Natanael, mab Suar ;

9. Euz a vreuriez Zabulon, Eliab, mab Helon ;

10. Hogen euz a vugale Jozef ; euz a Efraim, Elisama, mab Ammiud ; euz a Vanasez, Gamaliel, mab Fadasur ;

11. Euz a Venjamin, Abidan, mab Gedeon ;

12. Euz a Zan, Agiezer, mab Amisadai ;

13. Euz a Aser, Fegiel, mab Okran ;

14. Euz a Had, Eliasaf, mab Duel ;

15. Euz a Neftali, Ahira, mab Enan ;

16. Ar re-ze eo ar brioñsed ar re vrasa euz ar bobl en o breuriezou hag en o ziecezioù, ha pennou arme Izrael.

17. Moizez hag Aaron a gemeras ar re-mañ, gand an oll bobl ;

18. Hag o dastumjont en deiz kenta euz an eil miz, hag o niverjont dre an tiegezioù, hag an tiez, hag ar herentiezou, hag ar pennou, hag anoioù pep hini, adaleg ugent vloaz hag ohpenn,

19. Evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez. Niveret e oent e distro Sinai.

20. Ar vibien Ruben kenta-ganet Izrael, dioh o rummou, hag o herentiezou, hag o zier, hag anoù pep hini anezo, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

21. E oe kavet anezo c'hweh mil ha daou-ugent mil ha pemp kant¹²⁶.

22. A vibien Simeon, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

23. E oe kavet anezo nao mil hag hanter-kant mil ha tri-hant¹²⁷.

24. A vibien Gad, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

25. E oe kavet anezo pemp mil ha daou-ugent mil ha c'hweh-kant hag hanter-kant¹²⁸.

¹²⁶ c'hweh mil ha daou-ugent mil ha pemp kant : 46.500.

¹²⁷ nao mil hag hanter-kant mil ha tri-hant 59.300.

26. A vibien Juda, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

27. E oe kavet anezo pevar mil deg ha tri-ugent mil ha c'hweh-kant¹²⁹.

28. A vibien Izakar, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

29. E oe kavet anezo pevar mil hag hanter-kant mil ha pevar hant¹³⁰.

30. A vibien Zabulon, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

31. E oe kavet anezo seiz mil hag hanter-kant, mil ha pevar-hant¹³¹.

32. A vibien Jozef, da lavaroud eo, a vibien Efraim, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

33. E oe kavet anezo daou-ugent mil ha pemp-kant¹³².

34. A vibien Manasez, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

35. E oe kavet anezo daou vil ha tregont mil ha daou-hant¹³³.

36. A vibien Benjamin, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

37. E oe kavet anezo pemp mil ha tregont mil ha pevar-hant¹³⁴.

38. A vibien Dan, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

39. E oe kavet anezo daou vil ha tri-ugent mil ha seiz kant¹³⁵.

40. A vibien Aser, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

41. E oe kavet anezo eur mil ha daou-ugent mil ha pemp-kant¹³⁶.

42. A vibien Neftali, dioh o rummou ; hag o herentiezou, ha tiez o zadou ; hag o niveri pep hini dre e ano, kement gwaz adaleg ugent vloaz hag ohpenn, a helle mond d'ar brezel.

43. E oe kavet anezo tri mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant¹³⁷.

44. Setu ar re a niveras Moizez hag Aaron, hag an daouzeg priñs euz a Izrael, o verka pep hini dre e di hag e gerentiez.

45. Hag an niver oll euz a vugale Izrael, dioh o ziez hag o herentiezou, adaleg ugent vloaz pe ohpenn, euz a gement hini a helle mond d'ar brezel,

¹²⁸ pemp mil ha daou-ugent mil ha c'hweh-kant hag hanter-kant : 45.650.

¹²⁹ pevar mil deg ha tri-ugent mil ha c'hweh-kant : 74.600.

¹³⁰ : pevar mil hag hanter-kant mil ha pevar hant : 54.400.

¹³¹ seiz mil hag hanter-kant, mil ha pevar-hant : 57.400

¹³²

daou-ugent mil ha pemp-kant : 40.500.

¹³³ daou vil ha tregont mil ha daou-hant : 32.200.

¹³⁴ pemp mil ha tregont mil ha pevar-hant : 35.400.

¹³⁵ daou vil ha tri-ugent mil ha seiz kant : 62.700.

¹³⁶ eur mil ha daou-ugent mil ha pemp-kant : 41.500.

¹³⁷ tri mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant : 53.400.

46. A oe euz a dri mil ha c’hweh-kant mil hag pemp-kant hag hanter-kant¹³⁸.

47. Hogen al Levited ne oant ket niveret ganto e breuriez o herentiezou.

48. Rag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

49. Na ra ket nivererez breuriez Levi, ha na laka ket he niver gand hini bugale Izrael :

50. Hogen laka i da brederia tabernakl an testeni, e oll listri, ha kement a zell ouz al lidou. I eo a zougo an tabernakl, hag e oll binviou : i eo a ray e zervij hag a zavo he zeltou war-dro d’an tabernakl.

51. Pa vezo red mond en hent, al Levited a zistegno an tabernakl : ha pa vezo diazezet ar hamp, her stergnint. Kement diavêziad bennag a dostay, a vezo lakaet d’ar maro.

52. Hogen bugale Izrael a zavo o hamp, hervez ar strolladou, hag ar bandennou euz o arme.

53. Hogen al Levited a zisplego o zeltou war-dro d’an tabernakl, gand aon na gouezje ar vuanegez war an niver braz euz a vugale Izrael ; hag i a veillo evid miroud tabernakl an testeni.

54. Bugale Izrael a reas eta kement en-doa an Aotrou gourhemennet da Voizez.

II. Pennad.

Reiz ar breuriezou hervez o zeltou.

1. An Aotrou a gomzas c’hoaz ouz Moizez hag Aaron, hag a lavaras :

2. Bugale Izrael a ziazezo o hamp war-dro tabernakl ar gevredigez, hervez o strolladou, o aroueziou, hag o bannielou, diho o ziez hag o herentiezou.

3. Juda a zavo e deltou etrezeg ar sav-heol, hervez strollou e arme ; ha Nahason, mab Aminadab a vezo ar priñs euz e vibien.

4. Ha niver ar stourmerien euz ar vreuriez-se a oa eta euz a bevarzeg mil ha tri-ugent mil ha c’hweh-kant¹³⁹.

5. Ar re euz a vreuriez Isakar a zavo o zellou ouz re Juda ; ha Natanael, mab Suar, a vezo priñs dezo.

6. Ha niver e oll stourmerien a oa euz a bevar mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant¹⁴⁰.

7. Eliab, mab Helon, eo ar priñs euz a vreuriez Zabulon.

8. Hag oll stourmerien e vreuriez a oa euz a seiz mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant¹⁴¹.

9. Ar re oll a zo bet niveret e kamp Juda, a oe euz a hweh mil ha nao-ugent mil ha pevar-hant¹⁴² : hag i a yelo ar re genta en o bandennou.

10. Elisur, mab Sedeut, a vezo ar priñs e kamp mibien Ruden, war-zu ar hreisteiz :

11. Hag e oll stourmerien a zo bet niveret, a oe euz a hweh mil ha daou-ugent mil ha pemp-kant¹⁴³.

12. Outañ e vezo savet kamp breuriez Simeon, pehini he-deus da briñs Salamiel, mab Surisaddai :

13. Hag e oll stourmerien a zo bet niveret, a oe euz a nao mil hag hanter-kant mil ha tri-hant¹⁴⁴.

¹³⁸ a dri mil ha c’hweh-kant mil hag pemp-kant hag hanter-kant : 603.550.

¹³⁹ a bevarzeg mil ha tri-ugent mil ha c’hweh-kant : 74.600

¹⁴⁰ a bevar mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant : 54.400

¹⁴¹ seiz mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant : 57.400

¹⁴² a hweh mil ha nao-ugent mil ha pevar-hant : 186.400

¹⁴³ a hweh mil ha daou-ugent mil ha pemp-kant : 46.500

14. Eliasaf, mab Duel, a oe priñs da vreuriez Gad.
15. Hag e oll stourmerien a zo bet niveret, a oe euz a bemp mil ha daou-ugent mil ha c’hweh-kant hag hanter-kant¹⁴⁵.
16. Ar re oll a zo bet niveret e kamp Ruben, a oe euz a eur mil deg ha seiz-ugent mil ha pevar-hant hag hanter-kant¹⁴⁶, en o bandennou : ar re-mañ a gerzo da eil.
17. Neuze tabernakl an testeni a vezo savet gand al Levited, hag o bandennou. Evel ma vezo savet, e vezo ivez lehiet : pep hini anezo a gerzo dioh e leh hag e reiz.
18. War-zu ar huz-heol e vezo kamp mibien Efraim ; hag Elisama, mab Ammiud, a zo priñs dezo.
19. Hag e oll stourmerien a zo bet niveret, a oe euz a zaou-ugent mil ha pemp-kant¹⁴⁷.
20. Hag outo e vezo breuriez mibien Manasez ; ha Gamaliel, mab Fadasur, a zo priñs dezo.
21. Hag e oll stourmerien a zo bet niveret, a oe euz a zaou vil ha tregont mil ha daou-hant¹⁴⁸.
22. Abidan, mab Gedeon, a oa ar priñs euz a vreuriez mibien Benjamin.
23. Hag e oll stourmerien a zo bet niveret, a oe euz a bemp mil ha tregont mil ha pevar-hant¹⁴⁹.
24. Ar re oll a zo bet niveret e kamp Efraim, a oe euz a eiz mil ha kant mil ha kant¹⁵⁰ den, en o bandennou : ar re-mañ a gerzo d’an trede.
25. War-zu an hanternoz e vezo lakaet kamp mibien Dan ; hag Ahiezer, mab Amissaddai, a zo priñs dezo.
26. Hag e oll stourmerien a zo bet niveret euz a zaou vil ha tri-ugent mil ha seiz kant¹⁵¹.
27. Outañ e vezo savet teltou breuriez Aser ; ha Fegiel, mab Okran, a zo priñs dezo ;
28. Hag e oll stourmerien a zo bet niveret, a oe euz a eur mil ha daou-ugent mil ha pemp-kant¹⁵².
29. Ahira, mab Enan, a zo priñs da vreuriez mibien Neftali ;
30. Hag e oll stourmerien a oe niveret a dri mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant¹⁵³.
31. Ar re oll a zo bet niveret e kamp Dan, a oe euz a seiz mil kant hag hanter-kant mil ha c’hweh-kant¹⁵⁴ : ar re-mañ a gerzo ar re ziweza.
32. An niver eta euz a vibien Izrael, dioh tiez o zadou, ha dioh bandennou o arme, a oe eta euz a dri-mil ha c’hweh-kant mil ha pemp-kant hag hanter-kant¹⁵⁵.
33. Hogen al Levited n’int ket bet niveret e-touez bugale Izrael : rag evel-se en-doa e hourhemennet an Aotrou da Voizez.
34. Ha bugale Izrael a reas kement en-doa gourhemennet an Aotrou. Lakaad a rejont o hamp dioh o bandennou, hag ez ejont en hent dioh o herentiezou ha tiez o zadou.

¹⁴⁴ nao mil hag hanter-kant mil ha tri-hant : 59.300

¹⁴⁵ a bemp mil ha daou-ugent mil ha c’hweh-kant hag hanter-kant : 45.650

¹⁴⁶ eur mil deg ha seiz-ugent mil ha pevar-hant hag hanter-kant : 151.450

¹⁴⁷ euz a zaou-ugent mil ha pemp-kant : 40.500

¹⁴⁸ a zaou vil ha tregont mil ha daou-hant : 32.200

¹⁴⁹ a bemp mil ha tregont mil ha pevar-hant : 35.400

¹⁵⁰ eiz mil ha kant mil ha kant : 108.100

¹⁵¹ a zaou vil ha tri-ugent mil ha seiz kant : 62.700

¹⁵² eur mil ha daou-ugent mil ha pemp-kant : 41.500

¹⁵³ a dri mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant : 53.400

¹⁵⁴ seiz mil kant hag hanter-kant mil ha c’hweh-kant : 157.600

¹⁵⁵ a dri-mil ha c’hweh-kant mil ha pemp-kant hag hanter-kant : 603.550

III. Pennad.

Nivererez al Levited.

1. Setu amañ nested Aaron ha Moizez, en deiz e pehini e komzas an Aotrou ouz Moizez war menez Sinai.
2. Ha setu anoiou mibien Aaron : Nadab e genta-ganet, ha goude Abiu, hag Eleazar, hag Itamar.
3. Setu anoiou mibien Aaron, a zo bet beleien, a zo bet eouliet, hag a zo bet leuniet ha sakret o daouarn evid ober kargou ar velegiez.
4. Hogen Nadab hag Abiu a varvas heb bugale, pa ginnigent tan a-ziavêz dirag an Aotrou e distro Sinai : hag Eleazar hag Itamar a reas ar velegiez dirag Aaron o zad.
5. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
6. Laka da dostaad breuriez Levi, ha laka hi da zevel dirag Aaron ar beleg-braz, evid ma servijint anezañ ha ma veillint ;
7. Ha ma virint kement a zell ouz al lid a dle ober ar bobl dirag tabernakl an testeni ;
8. Ha ma tiwallint listri an tabernakl, ha ma raint oll servij o harg.
9. Rei a ri al Levited,
10. Da Aaron ha d'e vibien, da bere int bet roet gand bugale Izrael. Hogen Aaron hag e vibien a liki da ober ar garg a veleg. Kement diavêziad a dostay evid ober ar garg-se, a vezo lakaet d'ar maro.
11. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
12. Me em-eus kemeret al Levited e-touez bugale Izrael e-leh ar re genta-ganet a zigor kov o mamm e-touez bugale Izrael ; rag-se al Levited a vezo din.
13. Rag kement kenta-ganet a zo din. Abaoe ma em-eus skoet en Ejipt gand ar re genta-ganet, em-eus santellaet evidon kement kenta-ganet e Izrael, adaleg an den beteg al loen : din int ; me eo an Aotrou.
14. Hag an Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez e distro ar Sinai, o lavaroud :
15. Niver mibien Levi dioh tiez o zadou, ha dioh o herentiezou ; kement paotr, adaleg eur miz hag ohpenn.
16. Ha Moizez o niveras, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou ;
17. Hag e kavas da vibien da Levi, dioh o anoiou, Geson, ha Kant ha Merari.
18. Mibien Gerson : Lebni ha Jesaar, Hebron, hag Oziel.
19. Mibien Kaat : Amram ha Jesaar, Hebron, hag Oziel.
20. Mibien Merari : Moholi ha Musi.
21. Euz a Heson ez eus deuet diou ouenn, hini Lebni, hag hini Semei ;
22. Ha pa oe niveret an oll baotred adaleg eur miz hag ohpenn, e oe kavet seiz mil ha pemp-kant¹⁵⁶.
23. Ar re-mañ a dle lakaad o hamp a-dreñv an tabernakl, etrezeg ar huz-heol.
24. Ha o-devezo da briñs Eliasaf, mab Lael.
25. Hag i a evesay ouz tabernakl ar gevredigez,
26. Ouz an tabernakl e-unan hag ouz e holher, ouz ar ouel a denner dirag dor tabernakl ar gevredigez, hag ouz goueliou an nor-dal : hag ivez ouz ar ouel a zo a-ispill ouz dor leur an tabernakl ha kement a zell ouz lid an aoter, kerdin an tabernakl hag e oll listri.

¹⁵⁶ seiz mil ha pemp-kant : 7.500

27. Euz a Gaat eo deuet gouennou an Amramited, hag ar Jesaarited, hag an Hebronited, hag an Ozielited. Ar re-ze eo gouennou ar Gaatited niveret dioh o anoïou.
28. An oll baotred, adaleg eur miz hag ohpenn, a oe euz a eiz mil ha c’hweh-kant¹⁵⁷, evid diwalloud ar santuar.
29. Hag i a lakay o hamp war-zu ar hreisteiz.
30. Hag i o-devezo da briñs Elisafan, mab Oziel.
31. Hag i a viro an arh, hag an daol, hag ar hantoler, aoteriou ha listri ar santuar, gand pere e raint o harg, hag ar ouel, hag an oll draou euz an doare-ze.
32. Hogen Eleazar, mab Aaron, ar beleg-braz, ha priñs priñsed al Levited, a vezo e penn d’ar re a veillo da zivall ar santuar.
33. Hogen euz a Verari ez eus deuet diou ouenn, hini Moholi hag hini Mosi, niveret dioh o anoïou.
34. An oll baotred, adaleg eur miz hag ohpenn, a oe euz a hweh mil ha daou-hant¹⁵⁸.
35. Hga i o-devezo da briñs Suriel, mab Abihaiel : lakaad a raint o hamp war-zu an hanternoz.
36. En o diwall o-devezo elfennou an tabernakl, hag e sparlou, hag ar peulioù gand o steudennou, ha kement a zell ouz al lid-se :
37. Peulioù al leur tro-war-dro gand o steudennou, hag ar peulioùigou gand o herdinigou.
38. Moizez hag Aaron gand e vibien, pere o-deus an diwall euz ar santuar e-kreiz bugale Izrael, a lakay o hamp dirag tabernakl ar gevredigez, da lavaroud eo, war-zu ar sav-heol. Kement diavêziad a dostay outo, a vezo lakaet d’ar maro.
39. An oll baotred e-touez al Levited, adaleg eur miz hag ohpenn, pere a oe niveret gand Moizez hag Aaron, dioh o herentiez, hervez gourhemenn an Aotrou ; a oe euz a zaou vil warn-ugent¹⁵⁹.
40. An Aotrou a lavaraz c’hoaz da Voizez : Niver ar baotred kenta-ganet e-touez bugale Izrael, adaleg eur miz hag ohpenn, ha dalh an niver anezo.
41. Al Levited a gemeri evidon e-leh ar re genta-ganet euz a vugale Izrael : me eo an Aotrou. Kemeroud a ri ivez o loened e-leh ar re genta-ganet euz a loened bugale Izrael.
42. Moizez eta a niveras, evel m’en-doa gourhemennet an Aotrou, ar re genta-ganet euz a vugale Izrael :
43. Hag an oll baotred, dioh o anoïou, adaleg eur miz hag ohpenn, a oe euz a zaou vil warn-ugent, trizeg ha trizeg-ugent¹⁶⁰.
44. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
45. Kemer al Levited e-leh ar re genta-ganet euz a vugale Izrael, ha loened al Levited e-leh o loened, hag al Levited a vezo din. Me eo an Aotrou.
46. Hag evid ar priz euz an daou-hant trizeg ha tri-ugent¹⁶¹ kenta-ganet euz a vugale Izrael, pere a zo ohpenn niver al Levited,
47. E kemeri pemp sikl dre bep penn, hervez pouez ar santuar. Ugent obolenn a dalv ar sikl.
48. Hag e roi da Aaron ha d’e vibien ar priz euz ar re a zo ohpenn.
49. Moizez eta a gemeras arhant ar re a oa ohpenn an niver-ze, hag o-doa dasprenet dioh al Levited,

¹⁵⁷ eiz mil ha c’hweh-kant : 8.600

¹⁵⁸ a hweh mil ha daou-hant : 6.200

¹⁵⁹ a zaou vil warn-ugent : 22.000

¹⁶⁰ a zaou vil warn-ugent, trizeg ha trizeg-ugent : 22.273

¹⁶¹ daou-hant trizeg ha tri-ugent : 273

50. Evid ar re genta-ganet euz a vugale Izrael, hag en-doa trizeg kant sikl pemp ha tri-ugent¹⁶², hervez pouez ar santuar.

51. Hag eñ a roas an arhant-se da Aaron ha d'e vibien, hervez ar gourhemenn en-doa roet an Aotrou dezañ.

IV. Pennad.

Kargou ha nivezerez al Levited.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez hag Aaron, o lavaroud :
2. Kemer niver mibien Kanaat euz a-greiz mibien Levi, dioh o herentiezou ha tiez o zadou,
3. Adaleg tregont vloaz hag ohpenn, beteg hanter-kant vloaz euz ar re oll a ya e tabernakl ar gevredigez evid skoazia hag evid servija.
4. Setu amañ karg mibien Kaat :
5. Pa vezo red sevel ar hamp, Aaron hag e vibien a yelo e-barz tabernakl ar gevredigez, hag e-barz Sant ar Zent, hag e tistennint ar ouel a zo a-ispill ouz an nor, hag e holoint ganti arh an testeni ;
6. Lakaad a raint c'hoaz war-horre eur golo krehin limestra hag e sternint warnezañ eur ballenn a liou glaz, hag e lakaint ar sparlou.
7. I a lakay ivez en eur ballenn a liou glaz an daol a varaou kinnig ; ha ganti an ezañsouerou, hag al listri-brev, hag ar hopou hag an hanafou evid ar skuillou braoued : hogen ar baraou a vezo bepred warnezi.
8. Stenna a raint war-horre eur ballenn dane, a holoint c'hoaz gand eur golo krehin limestra, hag e lakaint ar sparlou.
9. I a gemero ivez eur ballenn a liou glaz, gand pehini e holoint ar hantoler gand e gleuzeuriou, hag e hultaniou¹⁶³, hag e heveliou, hag e oll listri eoul a zo red evid kenderhel ar hleuzeuriou.
10. Kement-se a holoint gand krehin limestra, hag e lakaint ar sparlou.
11. Lakaad a raint ivez en eur ballenn a liou glaz an aoter aour, hag eh astennint warnezi eur golo krehin limestra ; hag e lakaint ar sparlou.
12. Lakaad a raint c'hoaz en eur ballenn a liou glaz an oll listri a zo red evid servij ar santuar, hag e stegnint war-horre eur golo krehin limestra ; hag e lakaint ar sparlou.
13. Hogen tenna a raint al ludu euz an aoter, hag e lakaint anezo en eur ouel limestra.
14. Hag e lakaint ganto an oll listri gand pere e reer he servij ; da lavaroud eo, ar regezennou, ar gultanou hag ar ferhier, ar hrogou hag ar palikedou. Lakaad a raint war oll listri an aoter eur golo krehin limestra, hag e lakaint ar sparlou.
15. Ha pa o-devezo Aaron hag e vibien goloet ar santuar hag e oll listri, pa vezo savet ar hamp, neuze e teuy mibien Kaat evid dougen kement a zo goloet : ha ne lakaint ket o daouarn war listri ar santuar, gand aon na varvjent. Setu karg mibien Kaat e tabernakl ar gevredigez.
16. Eleazar, mab Aaron, ar beleg-braz, a vezo dreisto ; eñ eo a brederio an eoul evid lakaad er hleuzeuriou, hag an ezañs a louzou kemmesket, hag ar sakrifis a ginniger bepred, hag eoul ar sakradur, ha kement a zalh euz a gempennadurez an tabernakl, hag an oll listri a zo er santuar.
17. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez hag Aaron, o lavaroud :
18. Na gollit ket¹⁶⁴ pobl Kaat euz a douez al Levited.

¹⁶² trizeg kant sikl pemp ha tri-ugent : 1.365

¹⁶³ e hultaniou : e welltennou.

19. Hogen grit kement-mañ evito, evid ma vevint ha na varvint ket, mar lakaont o dorn war Zant ar Zent. Aaron hag e vibien a yelo e-barz, hag i a aozo labour pep hini, hag a ranno ar beh a dle dougen pep hini.
20. Hogen arabad eo d'ar re all klask gweloud an traou a zo er santuar a-barz ma vezint goloet ; rag anez e varvjent.
21. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
22. Kemer ivez niver mibien Gerson, dioh o herentezou ha tiez o zadou, hag o nested,
23. Adaleg tregont vloaz hag ohpenn, beteg hanter-kant vloaz. Niver ar re oll a ya e-barz hag a zervij e tabenakl ar gevredigez.
24. Setu amañ karg mibien Gerson :
25. Dougen a raint goueliou an tabernakl, ha telt ar gevredigez, hag ar golo all, hag ar golo krehin limestra a zo war-horre ar re-mañ, hag ar golo a zo a-ispill ouz dor tabernakl ar gevredigez ;
26. Goueliou leur an nor-dal, hag ar ouel a zo ouz an nor dirag an tabernakl. Kement a zell ouz an aoter, ar herdinigou hag oll listri ar servij,
27. A vezo douget gand mibien Gerson, hervez gourhemenn Aaron hag e vibien : ha pep hini a ouezo petra eo e garg.
28. Honnez eo karg mibien Gerson e tabernakl ar gevredigez : hag i a vezo dindan beli Itamar, mab Aaron, ar beleg-braz.
29. Niveri a ri ivez mibien Merari, dioh o herentiezou ha tiez o zadou,
30. Adaleg tregont vloaz hag ohpenn, beteg hanter-kant vloaz, ar re oll a zo o harg e-barz hag a zervij e tabernakl ar gevredigez.
31. Houmañ eo o harg : dougen a raint elfennoù an tabernakl, hag e sparlou, ar peulioù hag ar steudennou.
32. Ha peulioù al leur tro-war-dro gand o steudennou, hag ar peulioùigou gand o herdinigou. Kemeroud a raint dioh niver an oll listri hag an arrebeuri, hag e tougint anezo.
33. Hounnez eo karg mibien Merari hag o zervij e tabernakl ar gevredigez : hag i a vezo dindan beli Itamar, mab Aaron, ar beleg-braz.
34. Moizez hag Aaron ha priñsed ar sinagog a niveras eta mibien Kaat, dioh o herentiezou ha tiez o zadou,
35. Adaleg tregont vloaz hag ohpenn, beteg hanter-kant vloaz, ar re oll a ra o harg e-barz, hag a zervij e tabernakl ar gevredigez.
36. Hag e oe kavet daou vil seiz-kant hag hanter-kant.
37. Hennez eo niver euz a bobl Kaat, pere a ya e tabernakl ar gevredigez : Moizez hag Aaron o niveras hervez gourhemennou en-doa roet an Aotrou da Voizez.
38. Niveret e oe ivez mibien Gerson, dioh o herentiezou ha tiez o zadou,
39. Adaleg tregont vloaz hag ohpenn, beteg hanter-kant vloaz, ar re oll a ra o harg e-barz hag a zervij e tabernakl ar gevredigez ;
40. Hag e oe kavet daou vil c'hweh-kant ha tregont.
41. Hennez eo an niver euz a bobl Gerson, o-deus niveret Moizez ha Aaron, hervez gourhemenn an Aotrou.
42. Niveret e oe ivez mibien Merari, dioh o herentiezou ha tiez o zadou,
43. Adaleg tregont vloaz hag ohpenn, beteg hanter-kant vloaz, ar re oll a zo o harg e-barz hag a zervij e tabernakl ar gevredigez ;
44. Hag e oe kavet tri mil ha daou-hant.

¹⁶⁴ Na gollit ket : na lamit ket.

45. Hennez eo an niver euz a vibien Merari, o-deus niveret Moizez hag Aaron, hervez gourhemenn an Aotrou dre zorn Moizez.

46. Ar re oll euz a-douez al Levited, pere a oe niveret dre o ano gand Moizez hag Aaron ha priñsed Izrael, dioh o herentiezou ha tiez o zadou,

47. Adaleg tregont vloaz hag ohpenn, beteg hanter-kant vloaz, ar re oll a zo o harg en tabernakl hag a zoug behiou,

48. A oe en oll euz a eiz mil pemp-kant ha pevar-ugent.

49. Moizez o niveras hervez gourhemenn an Aotrou, pep hini dioh e garg hag e veh, evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet dezañ.

V. Pennad.

Glanded ar hamp. Distaol. Sakrifis a warizi.

1. An aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

2. Lavar da vugale Izrael kas kuit euz o hamp an oll lovreien, ha neb a laosko da redeg e sper, ha neb a vezo en em zaotret gand eur horv maro :

3. Kasit eñ er-mêz euz ar hamp, daoust pe eo eur gwaz pe eur vaouez, gand aon na zaotrfent al leh e pehini e choman ganeoh.

4. Bugale Izrael a reas ar pezh a oa bet gourhemennet dezo, hag e kasjont ar remañ er-mêz euz ar hamp, evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet da Voizez.

5. An Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

6. Lavar an dra-mañ da vugale Izrael : Pa en-devezo eur gwaz pe eur vaouez greet unan euz ar pehejou a ra peurvuia an dud, ha pa o-devezo torret dre leziregez gourhemennou an Aotrou, ha pa vezint kouezet e droug,

7. E kovosaint o fehed, hag e tistaolint da neb ouz pehini o-deus pehet, ar gaou o-deus greet dezañ hag ar bempved lodenn ohpenn.

8. Ma n'en em gav den da biou e hell beza roet, e roint anezañ d'an Aotrou ; hag e vezo d'ar beleg, nemed an tourh a vez kinniget evid an dihaouidigez, evid ma vezo degemeret mad an ostiv.

9. Kement kenta-frouez a ginnig bugale Izrael, a zo ivez d'ar beleg ;

10. Ha kement a ginnig pep hini er santuar, hag a zo lakaet etre daouarn ar beleg, a vezo dezañ.

11. An aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

12. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Ma he-deus faziet eur wreg, hag o tisprizoud heh ozah,

13. Mar deo eet da gousked gand eur gwaz all : ma n'en-deus ket gellet an ozah disklêria an dra-ze da wir, ha mar chom kuzet an avoultriez, ha ma ne hell ket hi beza kendrehet gand testou, o veza ma n'eo ket bet paket e droug ;

14. Mar deu ar spered a waz da vrouda an ozah a-eneb e wreg, pehini a vezo bet saotret, pe tamallet e gaou,

15. E kaso-eñ anezi dirag ar beleg, hag e kinnigo eviti an degved lodenn euz a eur gonor bleud heiz. Ne skuillo ket a eoul warnezañ, ha ne lakay ket a ezañs, o veza ma eo eur sakrifis a waz, hag eur hinnig evid enklaskoud an avoultriez.

16. Ar beleg eta he hinnig, hag he lakay dirag an Aotrou :

17. Hag o veza kemeret dour santel en eul lestr pri, e lakay ennañ eun nebeud douar euz a leur an tabernakl.

18. Ha pa en em zalho ar wreg en he sav dirag an Aotrou, e tizoloy ar beleg he fenn, hag e lakay war he daouarn ar sakrifis da zerhel soñj, ha kinnig an oaz : hogen eñ

a zalho etre e zaouarn an doureier c’hwerobraz war bere en-doa berniet ar malloziou gand argarzigedez.

19. Hag eñ a grozo anezi, o lavaroud : Ma n’eo ket bet kousket eur gwaz diavêziad ganez, ha ma n’out ket en em zaotret o kuitaad gwele da ozah, an doureier-braz-mañ war bere em-eus taolet malloziou, ne raint ket a haou ouzit.

20. Hogen ma eh-eus kuitaet da ozah, ha ma out en em zaotret o kousked gand eur gwaz all :

21. E kouezi dindan ar malloziou-mañ : Ra roy an Aotrou ahanout da valloz ha da skwer d’e oll bobl : ra lakay da vreina da vorzed ; ra goeñvo ha ra darzo da gov.

22. Ra’z ay an doureier milliget-mañ en da gov ; ra lakaint da gov da goeñvi ha da vorzed da vreina. Hag ar wreg a lavaro : Amen, amen.

23. Neuze ar beleg a skrivo ar malloziou-ze en eul levr, hag eñ a lamo anezo goude gand an doureier-braz-se, e pere en-devezo taolet ar malloziou,

24. Hag o roy da eva dezi. Pe he-devezo-hi o hemeret,

25. Ar beleg a gemero euz he dorn ar sakrifis a oaz, hag e savo dirag an Aotrou ; hag hel lakay war an aoter : en heveleb doare koulskoude,

26. Ma en-devezo tennet kent eun dornad euz ar sakrifis a dle beza kinniget, evid beza devet war an aoter. Hag evel-se e roy an doureier c’hwerobraz da eva d’ar vaouez.

27. Pa he-devezo o evet, mar deo bet saotret, hag o tilezel heh ozah mar deo en em roet d’an avoultriez, an doureier milliget a yelo enni ; he hov a goeñvo, he morzed a vreino : hag ar vaouez-se a vezo da valloz ha skwer d’an oll bobl.

28. Ma n’eo ket bet saotret ar vaouez, e vezo dihaou hag he-devezo bugale.

29. Setu lezenn an oaz. Mar tilez eur wreg heh ozah, ha ma en em zaotr-hi ;

30. Ha mar deu an ozah da veza broudet gand ar spered a oaz, ha da gas e wreg dirag an Aotrou : ha mar gra ar beleg dezi kement a zo bet skrivet amañ ;

31. An ozah a vezo difazi, hag ar wreg a zougo he fallagriez.

VI. Pennad.

Gouestlou an Nazareed. Bennoziou ar veleien.

1. An Aotrou a gomzas c’hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

2. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Piou bennag, gwaz pe vaouez, en-devezo greet eul le evid beza santellaet, hag a vezo falvezet dezañ en em ouestla d’an Aotrou,

3. A ziuero gwin ha kement a hell mezvi. Ne evint ket a winegr greet gand gwin, na gand braoued all ebed ; ha ne evint netra euz a gement a zo tennet euz a zun ar rezin : ne zebrint na rezin nevez, na rezin seh.

4. En oll zeziou ma int en em ouestlet d’an Aotrou gand le, ne zebrint ket euz a gement a hell dond euz ar winienn, adaleg ar rezin seh, beteg ar markou.

5. E-pad an oll amzer ma vezo rannet an Nazareed, an aotenn ne dremeno ket war e benn, ken na vezo sevenet an oll zeziou evid pere eo en em ouestlet d’an Aotrou. Santel e vezo, hag e lezo da greski bleo e benn.

6. E-pad an oll amzer euz e ouestl, ne dostay ket ouz eur horv maro.

7. Ha n’en em zaotro ket war-lerh kañv e dad, pe e vamm, pe e vreur, pe e hoar, o veza ma ema gouestlerez an Aotrou war e benn.

8. E-pad an oll zeziou ma vezo rannet, e vezo santel d’an Aotrou.

9. Hogen ma varv eur re war eun taol dirazañ, e vezo saotret gouestl e benn : lakaad a ray raktal touza e benn e deiz e hlanerez, hag ivez d’ar seizved deiz.

10. Hogen d'an eizved deiz e kinnigo d'ar beleg diou durzunell, pe diou goulmig, e-tal dor tabernakl ar gevredigez.

11. Hag ar beleg a ginnigo unan evid ar pehed, hag eben evel eur sakrifis-losk ; hag e pedo evitañ, o veza ma en-deus pehet gand ar gwad euz an den maro-ze : hag e santellaio a-nevez e benn en deiz-se.

12. Hag eñ a ouestlo d'an Aotrou deziou e rannidigez, o kinnig eun oan bloaz evid ar pehed : en heveleb doare koulskoude ma teuy an deziou kenta da veza didalvez, o veza ma eo bet saotret e zantelez.

13. Setu lezenn ouestl an Nazaread. Pa vezo tremenet an deziou evid pere eo en em ouestlet, ar beleg a gaso anezañ e-tal dor tabernakl ar gevredigez ;

14. Hag e kinnigo e ginnig d'an Aotrou, eun oan bloaz dinamm evid eur sakrifis-losk, hag eun dañvad bloaz dinamm evid ar pehed, hag eun tourh dinamm evid an ostiv a beoh.

15. Kinnig a ray ivez eur gestad bara dihoell glebiet gand eoul, ha kouignou dihoell glebiet gand eoul, ha braoued kinnig pep hini anezo.

16. Ar beleg a ginnigo anezo dirag an Aotrou, ken evid ar pehed, ken evid ar sakrifis-losk.

17. Laza a ray ivez d'an Aotrou eun tourh evel eun ostiv a beoh : hag e kinnigo en heveleb amzer kestad ar baraou dihoell hag ar braoued-kinnig a dle beza roet diou ar hiz.

18. Neuze pennad bleo an Nazaread a zo gouestlet a vezo touzet e-tal dor an tabernakl a gevredigez : hag ar beleg a gemero e vleo hag o lakay war an tan a vo dindan ar sakrifis a beoh.

19. Kemeroud a ray ar skoaz poaz euz an tourh, eun dorz heb goell euz ar havell, hag eur gouign dihoell, hag e lakay anezo e dorn an Nazaread, goude beza touzet e benn.

20. An Nazaread o roy adarre d'ar beleg, pehini o zavo dirag an Aotrou ; ha goude beza bet santellaet e vezint d'ar beleg, evel ar poull-kalon a zo bet gourhemennet e ranan, hag ar vorzed ; godude-ze an Nazaread a hello eva gwin ;

21. Setu lezenn an Nazaread, pa en-devezo gouestlet e ginnig d'an Aotrou evid an amzer euz e ouestleréz, heb ar sakrifisou all a hello da ober gand e zorn e-unan. Evid en em beurzantella, e ray kement en-doa lakaet en e benn evid gouestl.

22. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

23. Lavar da Aaron ha d'e vibien : Evel-henn e vennigot bugale Izrael, hag e leverot dezo :

24. Ra vennigo an Aotrou ahanout, ha ra viro ahanout.

25. Ra ziskouezo an Aotrou e zremm dit, ha r'en-devezo truez ouzit.

26. Ra droy an Aotrou e zremm ouzit, ha ra roy ar peoh dit.

27. Evel-se e halvint va ano war vugale Izrael, ha me a vennigo anezo.

VII. Pennad.

Kinnigou priñsed ar breuriezou.

1. En deiz e pehini en-doa Moizez peurhreet an tabernakl, ha m'en-doa e zavet, ma en-doa e eouliet hag e zantellaet, gand e oll listri, hag an aoter ivez gand e oll listri ;

2. Priñsed Izrael hag ar pennou tiegez e peb breuriez, pere a hourhemenne d'ar re a oa bet niveret,

3. A ginnigas o roou dirag an Aotrou, c’hweh karr goloet, gand daouzeg ejenn. Daou briñs a ginnigas eur harr, ha peb a ejenn, hag e tegasjont anezo dirag an tabernakl.
4. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez :
5. Kemer i diganto evid servij an tabernakl, ha ro i d’al Levited hervez ar reiz euz o harg.
6. Moizez a gemeras eta ar hirri hag an ejenned, hag a roas anezo d’al Levited.
7. Daou garr ha pevar ejenn a roas da vibien Gerson, hervez an ezomm o-doa anezo.
8. Ar pevar harr all hag an eiz ejenn a roas da vibien Merari, hervez o harg hag o zervij, dindan beli Itamar, mab Aaron, ar beleg-braz.
9. Hogen da vibien Kaat ne roas na kirri nag ejenned, o veza ma int karget euz a zervij ar santuar, ha ma tougont o beh war o diskoaz.
10. Ar briñsed a reas eta o hinnig dirag an aoter evid sakrerez an aoter, en deiz e pehini e oe eouliet.
11. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Ra ginnigo pep priñs e roou, pep hini d’e zeiz, evid sakrerez an aoter.
12. En deiz kenta, Nahason, mab Aminadab, euz a vreuriez Juda, a roas e ginnig :
13. Hag e ginnig a oe eur plad arhant a boueze deg sikl ha c’hweh-ugent, eur hop arhant a boueze deg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :
14. Eul lestrig aour euz a zek sikl, leun a ezañs :
15. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :
16. Eur bouh evid ar pehed :
17. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Nahason, mab Aminadab.
18. En eil deiz, Natanael, mab Suar, priñs euz a vreuriez Isakar,
19. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c’hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :
20. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :
21. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :
22. Eur bouh evid ar pehed :
23. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Natael, mab Suar,
24. En trede deiz, Eliab, mab Helon, priñs bugale Zabulon,
25. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c’hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :
26. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :
27. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk.
28. Eur bouh evid ar pehed :
29. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Eliab, mab Helon.
30. Er pevare deiz, Elisur, mab Sedeur, priñs bugale Ruben,

31. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c'hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :

32. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :

33. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :

34. Eur bouh evid ar pehed :

35. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Elisur, mab Sedeur.

36. Er pempved deiz, Salamiel, mab Surisaddai, priñs bugale Simeon,

37. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c'hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :

38. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :

39. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :

40. Eur bouh evid ar pehed :

41. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Salamiel, mab Surisaddai.

42. Er c'hwehved deiz, Eliasaf, mab Duel ; priñs bugale Gad,

43. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c'hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :

44. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :

45. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :

46. Eur bouh evid ar pehed :

47. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Eliasaf, mab Duel.

48. Er seizved deiz, Elisama, mab Ammiud, priñs bugale Efraim,

49. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c'hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :

50. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :

51. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :

52. Eur bouh evid ar pehed :

53. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Elisama, mab Ammiud.

54. En eizved deiz, Gamaliel, mab Fasadur, priñs bugale Manase,

55. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c'hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :

56. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :

57. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :

58. Eur bouh evid ar pehed :

59. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Gamaiel, mab Fasadur.

60. En naved deiz, Abidan, mab Gedeon, priñs bugale Benjamin :

61. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c’hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :

62. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :

63. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :

64. Eur bouh evid ar pehed :

65. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Abidan, mab Gedeon.

66. En degved deiz, Ahiezer, mab Amisaddai, priñs bugale Dan,

67. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c’hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :

68. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :

69. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :

70. Eur bouh evid ar pehed :

71. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Ahiezer, mab Amisaddai.

72. En unnegved deiz, Fegiel, mab Okran, priñs bugale Aser,

73. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c’hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :

74. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :

75. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :

76. Eur bouh evid ar pehed :

77. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Fegiel, mab Okran.

78. En daouzegved deiz, Ahira, mab Enan, priñs bugale Neftali.

79. A ginnigas eur plad arhant euz a zeg sikl ha c’hweh-ugent, eur hop arhant euz a zeg sikl ha tri-ugent, hervez pouez ar santuar, ha leun o-daou a vleud glebiet gand eoul evid ar sakrifis :

80. Eul lestrig aour euz a zeg sikl, leun a ezañs :

81. Eun ejenn euz an tropell, hag eun tourh, hag eun oan bloaz evid ar sakrifis-losk :

82. Eur bouh evid ar pehed :

83. Hag evid ar sakrifis a beoh, daou ejenn, pemp tourh, pemp bouh, pemp oan bloaz. Setu kinnig Ahira, mab Okran.

84. Setu echu eta ar pezh a oe kinniget gand priñsed Izrael evid sakrerez an aoter, en deiz e oe pep hini eouliet : daouzeg plad arhant, daouzeg kop arhant, daouzeg lestrig aour.

85. Pep plad arhant o veza euz a zeg sikl ha c’hweh-ugent, ha pep kop euz a zeg sikl ha tri-ugent ; en heveleb doare ma poueze kevred an oll listri arhant daou vil sikl ha pevar-hant, hervez pouez ar santuar.

86. Daouzeg lestrig aour leun a ezañs, ha pep hini euz a zeg sikl, hervez pouez ar santuar : da lavaroud eo en oll c’hweh-ugent sikl aour :

87. Evid ar sakrifis-losk, daouzeg ejenn euz an tropell, daouzeg tourh, daouzeg oan bloaz, gand o braoued kinnig ; daouzeg bouh evid ar pehed.

88. Hag evid ar sakrifis a beoh, pevar ejenn warn-ugent, tri-ugent tourh, tri-ugent bouh, tri-ugent oan bloaz. Ar re-ze eo kinnigou sakrerez an aoter, pa oe eouliet.

89. Ha pa'z ee Moizez e tabernakl ar gevredigez, evid goulennn kuzul digand an orakl, e kleve ar vouez euz an hini a gomze outañ euz ar golher pehini a oa war arh an testeni etre an daou cherubin, a beleh e komze ouz Moizez.

VIII. Pennad.

Euz ar hantoler hag euz ar hleuzeuriou. Sakrerez al Levited.

1. An Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
2. Komz ouz Aaron, ha lavar dezañ : Pa'z-pezo lakaet ar seiz kleuzeur, e savi ar hantoler war-zu ar hreisteiz. Gourhemenn eta penaoz ar hleuzeuriou pere a zo lakaet war-zu an hanternoz a zello ouz taol ar bara kinnig, o veza ma tleont goulou al leh a zo dirag ar hantoler.
3. Evel-se e reas Aaron, hag e lakaas ar hleuzeuriou war ar hantoler, evel m'endoa gourhemennet an Aotrou da Voizez.
4. Hogen setu penaoz e oe greet ar hantoler : a aour skoet gand ar morzol e oa oll, ken ar walenn anezañ, ken an oll varrou a zave a bep tu : Moizez en-doa greet ar hantoler dioh ar skwer en-doa an Aotrou diskouezet dezañ.
5. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
6. Kemer al Levited euz a greiz bugale Izrael, ha glan i,
7. Hervez al lid-mañ : gand dour glanerez e sparli anezo, hag i a douzo oll vleo o horv. Ha goude m'o-devezo gwalhet o dillad, ha m'o-devezo en em hlannaet,
8. Kemerint eun ejenn euz an tropell, hag evid braoued kinnig bleud glebiet gand eoul : te a gemero ivez eun ejenn all euz an tropell evid ar pehed :
9. Hag e lakai al Levited da dostaad dirag tabernakl ar gevredigez, goude beza dastumet oll vugale Izrael.
10. Pa vezo al Levited dirag an Aotrou, bugale Izrael a lakay o daouarn warnezo ;
11. Hag Aaron a ginnigo al Levited, evel eur ro a ra bugale Izrael d'an Aotrou, evid ma servijint anezañ en e zervij.
12. Al Levited a lakay ivez o daouarn war benn an ejenned, a bere e kinnigi unan evid ar pehed, hag egile evid ar sakrifis-losk d'an Aotrou, evid ma pedi evito.
13. Lakaad a ri goude al Levited dirag Aaron hag e vibien, hag e sakri anezo, goude beza o hinniget d'an Aotrou.
14. Hag e ranni anezo euz a douez bugale Izrael, evid ma vezint din.
15. Ha goude-ze ez aint e tabernakl ar gevredigez, evid va zervija. Hag evel-se e hlani hag e sakri anezo, goude beza o hinniget d'an Aotrou : o veza ma int bet roet din evel eur ro gand bugale Izrael.
16. O hemeret em-eus evid ar re genta-ganet euz a Izrael, pere o-deus digoret kov o mamm.
17. Hag ar re genta-ganet euz a vugale Izrael a zo din, ken an dud, ken al loened. Me em-eus o zantellaet din, en deiz e pehini em-eus skoet gand kement kenta-ganet euz an Ejipt :
18. Ha me em-eus kemeret al Levited evid ar re oll genta-ganet euz a vugale Izrael.
19. Ha me em-eus o roet da Aaron ha d'e vibien euz a-greiz ar bobl, evid ma servijint ahanon e tabernakl ar gevredigez e leh Izrael, ha ma pedint evito ; gand aon na zeuje eur goul war ar bobl, mar kred tostaad ouz ar santuar.
20. Moizez hag Aaron, hag oll strollad bugale Izrael, a reas eta e-keñver al Levited kement en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.

21. Hag i a oe glannaet, hag i a walhas o dillad. Hag Aaron a zavas anezo dirag an Aotrou hag a bedas evito.

22. Evid, goude beza glannaet, ma'z afent e tabernakl ar gevredigez, evid ober o harg dirag Aaron hag e vibien. Evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez e-keñver al Levited, evel-se e oe greet.

23. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

24. Setu amañ al lezenn evid al Levited : Adaleg pemp bloaz warn-ugent hag ohpenn, ez aint e-barz an tabernakl evid ober o harg.

25. Ha pa o-devezo hanter-kant vloaz krenn, eh ehanit da zervija.

26. Skoazia a raint hepken o breudeur e tabernakl ar gevredigez, evid miroud ar pez a zo bet fiziet enno ; hogen ne raint mui o harg. Setu petra a lakai dindan karg al Levited.

IX. Pennad.

Eil Pask. Peul koabr ha peul tan.

1. An eil bloaz goude ma oa deuet ar bobl er-mêz euz a vro an Ejipt, hag er henta miz, an Aotrou a gomzas ouz Moizez, e distro Sinai, o lavaroud :

2. Ra ray bugale Izrael ar Pask en e amzer,

3. D'ar pevarzegved deiz euz ar miz-mañ war ar pardaez, hervez an oll lidou hag an oll gemennou.

4. Ha Moizez a hourhemennas ouz bugale Izrael ober ar Pask.

5. Hag i a reas ar Pask en e amzer, ar pevarzegved deiz euz ar miz war ar pardaez, war menez Sinai. Bugale Izrael a reas kement tra evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.

6. Hogen c'hoarvezoud a reas penaoz lod euz ar re a oa deuet da veza dihlan, evid beza tostaet ouz eur horv maro, ha pere na helljont ket ober ar Pask en deiz-se, a yeas da gaoud Moizez hag Aaron,

7. Hag a lavaras dezo : Dihlan om evid beza tostaet ouz eur horv maro : perag ne vem-ni ket lezet evid-se kinnig en e amzer ar hinnig d'an Aotrou e-mesk bugale Izrael ?

8. Ha Moizez a lavaras dezo : Chomit en ho sav, ha me a ya da houlen ali digand an Aotrou evid gouzoud petra a hourhemennou diwar ho penn.

9. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

10. Lavar da vugale Izrael : Mar deo dihlan eun den euz ho pobl evid beza tostaet ouz eur horv maro, pe mar dema en hent pell-braz, graet Pask an Aotrou.

11. En eil miz, d'ar pevarzegved deiz euz ar miz war ar pardaez : e zebri a raint gand bara dihoell ha lezegennou gouez :

12. Ne lezint netra euz anezañ beteg ar mintin, ha ne dorrint ket e eskern ; oll lidou Pask a virint.

13. Hogen an den a vezo glan, ha ne vezo ket en hent, ha ne ray ket koulskoude ar Pask, a vezo gwastet euz a-greiz e bobl, o veza n'en-deus ket en e amzer kinniget ar sakrifis d'an Aotrou : dougen a ray e-unan e behed.

14. Ma en em gav en ho touez ergerzerien ha diavêzidi, e raint ivez ar Pask d'an Aotrou hervez e lidou hag e lezennou. An heveleb kelenn a vezo ganeoh, ken evid an diavêzidi, ken evid tud ar vro.

15. En deiz eta pehini e oe savet an tabernakl, e oe goloet gand eur goabrenn : hogen adaleg ar pardaez beteg ar mintin e oa war an telt evel eur weledigez tan.

16. Evel-se e c'hoarveze bepred : e-pad an deiz eur goabrenn a holoe anezañ, hag e-pad an noz evel eur weledigez tan.

17. Pa en em denne ar goabrenn diwar an tabernakl, neuze bugale Izrael en em lakae en hent, hag el leh ma chome a-zav ar goabrenn, eno e stegnent o hamp.

18. Hervez gourhemenn an Aotrou en em lakaent en hent, hag hervez e hourhemenn e stegnent an tabernakl. E-pad an oll zeiziu ma arsave ar goabrenn war an tabernakl, e choment en heveleb leh.

19. Ma c'hoarveze gand ar goabrenn chom pell amzer war an tabernakl, bugale Izrael a oa war-hed d'an Aotrou, ha n'en em lakaent ket en hent,

20. E-pad an oll zeiziu ma chome ar goabrenn war an tabernakl. Hervez gourhemennou an Aotrou e stegnent o zeltou, hag hervez e hourmenenn e tistegnent anezo.

21. Mar doa chomet ar goabrenn adaleg ar pardaez beteg ar mintin, ha ma'z ee kuit diwar an tabernakl da darz an deiz, en em lakaent en hent raktal : ha goude eun deiz hag eun noz pa zeue d'en em denna, e plegent o zeltou.

22. Mar chome ar goabrenn war an tabernakl a-hed daou zeiz pe eur miz, pe c'hoaz pelloh, bugale Izrael a chome ivez en heveleb leh, ha n'ez eent ket en hent : hogen kerkent ha ma en em denne diwar an tabernakl, e savent ar hamp.

23. Dih ger an Aotrou e tisplegent o zeltou, ha diho e her en em lakaent en hent : hag i a oa war-hed d'an Aotrou, hervez e hourhemenn dre henou Moizez.

X. Pennad.

Diwar-benn son an trompillou arhant. An Izraelited a ya kuit euz a zistro Sinai.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :

2. Gra evidout diou drompill arhant greet gand ar morzol, gand pere e helli dastum an oll bobl pa vezo red sevel ar hamp.

3. Ha pa'z-pezo lakaet da zeni an trompillou-ze, an oll bobl en em zastumo war da dro e-tal dor tabernakl ar gevredigez.

4. Ma ne zonez nemed eur wech, e teuy d'az kavoud priñsed ha pennou Izrael.

5. Hogen mar sonez pelloh amzer, ha mar deo skiltroh ar zon, e savo da genta o hamp ar re a zo war-zu ar sav-heol.

6. Da eil son an drompill, ha pa glevint eun trouz heñvel ouz an trouz kenta, ar re a zo war-zu ar hreisteiz a blego o zeltou : hag ar re all a ray an heveleb tra, pa zono trompillou an diskamperez.

7. Hogen pa vezo red dastum ar bobl, e vezo kompez son an trompillou, ha ne zonit ket skiltr.

8. Ar veleien, mibien Aaron, a zono an trompillou : al lezenn-ze a vezo peurbaduz en ho kouennou.

9. Mar dit er-mêz euz ho pro evid brezellekaad ouz hoh enebourien pere a stourm ouzoh, e reot eur son skiltr gand an trompillou, hag an Aotrou ho Toue en-devezo koun ahanoh, evid ho tenna euz a zaouarn hoh enebourien.

10. Pa reot banvez, pa lidot deiziu gouel, pe an deiziu kenta euz ar miziu, e sonot an trompillou war ar sakrifisou-losk ha war an ostivou a beoh, evid ma vezint da goun deoh euz ho Toue. Me 'zo an Aotrou, ho Toue.

11. En eil bloaz, en eil miz, en ugentved deiz euz ar miz, e savas ar goabrenn diwar tabernakl ar gevredigez.

12. Ha bugale Izrael a yeas en hent, euz a zistro Sinai, hervez o bandennou, hag ar goabrenn a arzavas e distro Faran.

13. Hag ar re a zavas da genta o hamp, hervez gourhemenn an Aotrou dre henou Moizez,
14. A oe mibien Juda, hervez o bandennou, a bere edo priñs Nahason, mab Aminadab.
15. Natanael, mab Suar, a oa priñs breuriez Isakar,
16. Eliab, mab Helon, a oa priñs breuriez Zabulon.
17. Hag o veza bet distegnet an tabernakl, mibien Gerson ha Merari a zougas anezañ, hag a yeas en hent.
18. Mibien Ruben a yeas goude, hervez o bandennou hag o reiz : Helisur, mab Sedeur, a oa da briñs dezo.
19. Salamiel, mab Surisaddai, a oa priñs breuriez mibien Simeon.
20. Eliasaf, mab Duel, a oa priñs breuriez Gad.
21. Ar Haalited a yeas goude, o tougen ar santuar : dougen a reed an tabernakl, ken na vijed deuet d'al leh e pehini e tlee beza savet.
22. Mibien Efraim a zavas ivez o hamp, hervez o bandennou, hag Elisama, mab Ammuid, a oa da briñs dezo.
23. Gamaliel, mab Fadasur, a oa priñs breuriez mibien Manase.
24. Abidan mab Gedeon, a oa priñs breuriez Benjamin.
25. Ar re ziweza euz an oll gampou pere en em lakaas en hent, eo mibien Dan ; mond a rejont hervez o bandennou, hag Ahiezer, mab Amisaddai, a oa da briñs dezo.
26. Fegiel, mab Okran, a oa priñs breuriez Aser.
27. Ahira, Enan, a oa priñs breuriez Neftali.
28. Setu reiz kampou bugale Izrael hervez o bandennou, pa en em lakaent en hent.
29. Neuze Moizez a lavaras da Hobab, mab Ragel, ar Madianitad, e gar-nez : Mond a reom d'al leh a dle rei an Aotrou deom : deus ganeom, evid ma raim vad dit ; rag an Aotrou en-deus lavaret e roje madou da Izrael.
30. Hag Hobab a lavaras dezañ : N'ez in ket ganez ; hogen distrei a rin em bro, e pehini on bet ganet.
31. Ha Moizez a lavaras dezañ : N'on dilez ket : rag te a oar e pe lehiou e tleom sevel or hamp en distro, ha te a vezo da rener deom.
32. Ha pa vezi deuet ganeom, e roim dit ar gwella euz a gement vad a roy an Aotrou deom.
33. Mond a rejont eta euz a venez an Aotrou, hag e kerzjont e-pad tri devez : hag arh kevredigez an Aotrou a yee en o raog, o verka al leh e pehini e tleent kampa 'hed an tri deiz-se.
34. Koabr an Aotrou a oa ivez warnezo 'hed an deiz e-pad ma kerzent.
35. Ha pa zaved an arh, e lavare Moizez : Sao, Aotrou ; ra vezo skignet da enebourien, ha ra deho dirazout ar re a gasa ahanout.
36. Ha pa veze diazezet an arh, e lavare : Distro, Aotrou, etrezeg niver braz arme Izrael.

XI. Pennad.

Kroz an Izraelited. Doue a lavar dibab deg den ha tri-ugent evid skoazia Moizez.

1. Koulskoude e savas kroz e-touez ar bobl a-eneb an Aotrou, o veza ma klemmjent euz o skuizder. Ha pa glevas an Aotrou kement-se, ez eas droug ennañ. Hag eun tan kaset gand an Aotrou a grogas en o zouez hag a zavas bevonn ar hamp.
2. Hag ar bobl o veza garmet ouz Moizez, Moizez a bedas an Aotrou, hag an tan a vougas.

3. Hag eñ a anvas al leh-se Tangwall, o veza ma oa bet kroget eno tan an Aotrou en o eneb.
4. Rag eur vandenn dudigou a oa en em vesket ganto, hag a oa deuet war o lerh, o-doe eur c'hoant direiz ; eh azezjont en eur ouela, ha mibien Izrael o veza en em unanet ganto, e leverjont : Piou a roy deom kig da zebri ?
5. Koun on-eus euz ar pesked a zebrem en Ejipt evid netra : dond a ra en or spered ar hokombrez, ar meloñs, ar pour, an ognon, hag ar hignen.
6. Goeñvet eo on ene, on daoulagad ne welont netra nemed Mann¹⁶⁵.
7. Hogen ar Mann a zo heñvel ouz had koriander¹⁶⁶, hag euz a liou ar bdellion¹⁶⁷.
8. Ar bobl a yee war-dro hag a zastume anezañ : neuze e vale anezañ dindan ar mên-milin, pe e vreve anezañ en eul lestr-brev : e lakaad a ree da boaza en eur pod, hag e ree gantañ tourtellou pere o-doa ar blaz evel euz a vara glebiet gand eoul.
9. Ha pa goueze ar gliz war ar hamp e-pad an noz, e koueze ivez ar Mann.
10. Moizez eta a glevas ar bobl o ouela, pep hini e-touez e dud hag e-tal e del. Ha neuze an Aotrou a zavas droug ennañ ; ha Moizez a oe gwall hlaharet gand kement-se.
11. Hag eñ a lavaras d'an Aotrou : Perag eh-eus-te glaharet da zervijer ? Perag ne gavan-me ket trugarez dirazout ? Ha perag eh-eus-te lakaet pouez an oll bobl-se warnon ?
12. Ha me eo em-eus engehentet an oll dud-se, pe em-eus o ganet, evid ma liviri din : Doug i war da galon, evel ma eo boazet eur vagerez da zougen he bugel, ha kas anezo d'an douar em-eus gouestlet gand le rei dezo ?
13. Peleh ema ar hig a hellfen da rei da gemend-all a dud ? Gouela a reont a-eneb din, o lavaroud : Ro deom kig da zebri.
14. N'hellan ket dougen va-unan ar bobl-se, rag re bounner eo evidon.
15. Hogen ma n'eo ket da youl, e pedan ahanout d'am lakaad da vervel ha da rei gras din dirag da zaoulagad, evid na vezin ket glaharet gand kement a boan.
16. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Dastum din deg den ha tri-ugent euz a henaoured Izrael, pere a anavezi evel ar re gosa, hag ar re zesket euz ar bobl, hag e kasi anezo e-tal tabernakl ar gevredigez, hag o likii da chom eno ganez.
17. Ha me a ziskenno eno evid komz ouzit ; hag e kemerin euz da spered, hag e roin anezañ dezo, evid ma tougingt ganez beh ar bobl, ha na vezi ket karget da-unan.
18. Lavaroud a ri ivez d'ar bobl : En em zantellait : warhoaz e tebrot kig ; rag me em-eus ho klevet, o lavaroud : Piou a roy kig deom da zebri ? Mad e oam en Ejipt. An Aotrou eta a roy deoh kig da zebri ;
19. Nann evid eun deiz, nag evid daou zeiz, nag evid pemp deiz, nag evid deg deiz, nag evid ugent deiz,
20. Hogen e-pad eur mizvez a zeiziou, ken na zeuy er-mêz euz ho tifronn, ha ma troy e heug deoh ; o veza ma hoh-eus distaolet an Aotrou pehini a zo en ho kreiz, ha ma hoh-eus gouelet dirazañ, o lavaroud : Perag om-ni deuet er-mêz euz an Ejipt ?
21. Ha Moizez a lavaras dezañ : Euz a hweh-kant mil den war droad eo ar bobl-mañ ; hag e leverez : Rei a rin dezo kig da zebri e-pad eur mizvez hed-da-hed.
22. Ha lazet e vezo eun niver braz a zeñved hag a ejenned, evid ma vezo a-walh evid o boueta ? Ha dastumet e vezo oll besked ar mor evid rei dezo o gwalh ?
23. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Ha dihalloud eo dorn an Aotrou ? Bremañ e weli hag e vezo greet evel a lavaran.

¹⁶⁵ Mann : gand eun M, a dalvez kement ha "paner"

¹⁶⁶ koriander : eur blantenn.

¹⁶⁷ bdellion : eur blantenn.

24. Moizez a zeuas eta, hag a lavaras d'ar bobl ar pez en-doa lavaret an Aotrou ; hag o veza dastumet deg den ha tri-ugent euz a henaoured Izrael, e lakaas anezo dirag an tabernakl.

25. Neuze an Aotrou a ziskennas en eur goabrenn hag a gomzas ouz Moizez ; hag o kemeroud euz a spered a oa en hemañ, e roas d'an deg den ha tri-ugent. Ha pa oe en em arzaot ar spered warnezo, e tiouganjont, hag e rejont bepred abaoe.

26. Hogen daou euz an dud-se a oa chomet er hamp, a bere unan a oa anvet Eldad, hag egile Medad ; hag ar spered a arzaos warnezo : rag i ivez e oa bet skrivet o ano ; hogen ne oant ket eet war-dro d'an tabernakl.

27. Ha pa ziouganent er hamp, e teredas eun den yaouank, hag e lavaras da Voizez : Eldad ha Medad a ziougan er hamp.

28. Raktal Jozue, mab Nun, ministr Moizez, ha dibabet e-touez kalz re all, a lavaras : Moizez, va Aotrou, harz outo.

29. Ha Moizez a lavaras dezañ : Perag out-te oazuz en abeg din ? A-youl ma tiouganfe an oll bobl, ha ma roje an Aotrou e spered dezo !

30. Ha Moizez a zistroas d'ar hamp gand henaoured Izrael.

31. Neuze eun avel kaset gand an Aotrou o veza dezouget koailled euz an tu all d'ar mor, o hasas er hamp ha war-dro d'ar hamp, war-hed eun devez kerzed ; hag i a nije en êr war-hed daou ilinad euz a horre an douar.

32. Ar bobl a zavas eta, hag a zastumas e-pad an devez-se, hag an noz e-houde, hag antronoz, kement a goailled ma o-doe, ar re o-doa an nebeuta, deg muzul anezo ; hag i o lakaas da zeha tro-war-dro d'ar hamp.

33. Edo c'hoaz ar hig ouz o dent, ha n'o-doa ket debret ar boued-se, pa zavas froudenn an Aotrou ouz ar bobl, hag e skoas warnezo eur gouli braz-meurbed.

34. Hag al leh-se a oe anvet Beziou ar gwall-youl : rag eno e oe beziet ar bobl en-doa youlet kig. Hogen o veza eet kuit euz a Veziou ar gwall-youl, e teujont da Haserot, hag e chomjont eno.

XII. Pennad.

Mari skoet gand al lovrentez.

1. Hogen Mari hag Aaron a gomzas a-eneb Moizez, en abeg d'e wreg a oa Etiopadez,

2. Hag a lavaras : Ha dre Voizez hepken en-deus-eñ komzet an Aotrou ? Ha n'en-deus-eñ ket ivez komzet ouzom ? Pa glevas an Aotrou kement-se,

3. (Rag Moizez a oa an habaska euz an oll dud a chome war an douar),

4. E lavaras raktal da Voizez ha da Aaron ha da Vari : It c'hwi hepken d'an tabernakl a gevredigez. Ha pa oent eet di,

5. An Aotrou a ziskennas er peul koabr¹⁶⁸, hag o sevel e-tal dor an tabernakl, e halvas Aaron ha Mari. Pa oe deuet ar re-mañ,

6. E lavaras dezo : Selaouit va geriou : Mar bez en ho touez eur profed d'an Aotrou, en em ziskouezin dezañ en eur weledigez, pe e komzin outañ dre e gousk.

7. Hogen n'eo ket evel-se e-keñver Moizez va zervijer, pehini a zo feal-braz em oll di.

8. Rag me a gomz outañ a henou e genou ; hag eñ a wel an Aotrou splann, nann dindan lavariou goloet na dindan doareou. Perag eta n'hoh-eus-hu ket bet a aon o trougomz diwar-benn va zervijer Moizez ?

¹⁶⁸ peul koabr : bann koabr.

9. Hag an Aotrou o veza eet droug ennañ outo a yeas kuit.
10. Hag en heveleb amzer ar goabrenn a oa e-tal dor an tabernakl en em dennas kuit ; ha setu Mari a oe gwelet gwenn a loventez evel an erh ; ha pa en-doe Aaron he gwelet, hag hi goloet a loventez,
11. E lavaras da Voizez : Me az ped, Aotrou, na zav ket en on eneb ar pehed-se on-eus greet dre follentez :
12. Ha na zeuet ket houmañ evel eun den maro, hag evel eur siohan a daoler er-mêz euz a gov e vamm. Setu a-vremañ eo debret gand al loventez an hanter euz he horv.
13. Neuze Moizez a harmas ouz an Aotrou, o lavaroud : Va Doue, me az ped, plijet ganez parez anezi.
14. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Ma en-defe he zad skopet ouz he dremm, ha na vije ket bet dleet dezi chom e-pad seiz devez da vihanna goloet a vez ? Ra vezo pellaet eta diou ar hamp e-pad seiz devez, ha goude-ze e vezo galvet.
15. Mari eta a oe pellaet diou ar hamp e-pad seiz devez : hag ar bobl n'ez eas kuit euz al leh-se ken na oe azgalvet Mari.

XIII. Pennad.

Moizez a gas tud evid anaoud an douar gouestlet.

1. Hogen ar bobl a yeas kuit euz a Haserot, hag a zisplegas he zeltou e distro Faran :
2. Hag eno e komzas an Aotrou ouz Moizez, o lavaroud :
3. Kas tud evid anaoud douar Kanaan, a dlean da rei da vugale Izrael, tud euz ar re genta euz a beb breuriez.
4. Moizez a reas ar pezh en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ, hag e kasas euz a zistro Faran tud euz ar re genta, a bere setu o anoioù :
5. Euz a vreuriez Ruben, Sammua, mab Zekur.
6. Euz a vreuriez Simeon, Safat, mab Huri.
7. Euz a vreuriez Juda, Kaleb, mab Jefone.
8. Euz a vreuriez Isakar, Igal, mab Jozef.
9. Euz a vreuriez Efraim, Osee, mab Nun.
10. Euz a vreuriez Benjamin, Falti, mab Rafu.
11. Euz a vreuriez Zabulon, Gaddiel, mab Sodi.
12. Euz a vreuriez Jozef, pe euz a vreuriez Manase, Gaddi, mab Susi.
13. Euz a vreuriez Dan, Ammiel, mab Gemalli.
14. Euz a vreuriez Aser, Stur, mab Mikael.
15. Euz a vreuriez Neftali, Nahabi, mab Vapsi.
16. Euz a vreuriez Gad, Guel, mab Maki.
17. Setu anoioù an dud a gasas Moizez evid anaoud an douar : hag e roas da Osee, mab Nun, an ano a Jozue.
18. Moizez eta o hasas evid anaoud douar Kanaan, hag a lavaras dezo : Pignit war-zu ar hreisteiz ; ha pa viot deuet d'ar menezioù,
19. Evesait petra eo an douar-ze ; petra eo ar bobl a chom ennañ ; mar deo kreñv pe gwan ; ma ez eus kalz pe nebeud anezi ;
20. Mar deo mad pe fall an douar ; mar deo mogeriet, pe ne deo ket ar hêriou ;
21. Mar deo druz pe distu an douar ; mar deo koadeg pe digoadeg. Bezit kaloneg, ha degasit deom euz a frouez an douar. Hogen bez' e oa neuze an amzer e pehini e helled debri ar rezin kenta.

22. Goude ma oant pignet, eh evezajont oh an douar, adaleg distro Sin, betek Rohob, war harzou bro Emat.

23. Hag ez ejont war-zu ar hreisteiz, hag e teujont da Hebron, e peleh edo Akiman, ha Sisai, ha Tolmai, mibien Enak : rag Hebron a zo bet savet seiz vloaz a-barz¹⁶⁹ Tanis, kêr euz an Ejipt.

24. Hag o veza eet betek ar froud anvet Bod-rezin, e trohjont eur skourr gwini gand e vod-rezin a oe douget gand daou zen war eur varrenn. Kemeroud a rejont ivez avalou-grenadez ha fiez euz al leh-se,

25. A oe anvet Neheleskol, da lavaroud eo, froud ar bod-rezin, o veza m'o-doa bugale Izrael degaset ahano ar bod rezin-ze.

26. Ar re a oa eet da weloud douar Kanaan, a zistroas a-benn daou-ugent devez, goude beza greet tro ar vro ganto.

27. Hag e teujont da gavoud Moizez hag Aaron, hag oll strollad bugale Izrael e distro Faran war-zu Kadez. Hag o veza danevellet pep tra dezo ha d'an oll bobl, e tiskouezjont dezo frouez an douar :

28. Hag e komzjont outo, o lavaroud : Bet om en douar da behini hoh-eus or haset, e pehini evid gwir e tiver al lêz hag ar mel, er hiz ma heller e anaoud dre ar frouez-mañ.

29. Hogen an dud a chom ennañ a zo euz ar re greñva, hag i o-deus kêriou braz ha mogeriet. Gouenn Enak on-eus gwelet eno.

30. Amalek a chom etrezeg ar hreisteiz : an Heteed, hag ar Jebuzeed, hag an Amorreed e broiou ar meneziou, hag ar Gananaed a chom lez ar mor hag a-hed ster ar Jourdan.

31. Koulskoude, Kaleb, evid habaskaad kroz ar bobl a zave a-eneb Moizez, a lavaras : Deom, ha kemerom ar vro-ze, rag he hemeroud a hellom.

32. Hogen ar re all a oa bet gantañ a lavare : Ne hellom ket mond a-eneb ar bobl-se, rag kreñvoh eo egedom.

33. Hag i a wallvrudas, dirag bugale Izrael, ar vro o-doa gwelet, o lavaroud : An douar on-eus kerzet e-barz a zebr ar re a chom ennañ : ar bobl on-eus gwelet ennañ a zo he ment braz-meurbed.

34. Gwelet on-eus eno tud disneuz, mibien Enak euz a ouenn al langouineien : hag en o hichenn ne oam-ni heñvel nemed ouz killeien-raden.

XIV. Pennad.

Kroz an Izraelited. Doue a gastiz ar grozerien.

1. Neuze ar bobl oll en em lakaas da harmi, hag a ouelas 'hed an noz ;
2. Hag oll vugale Izrael a grozas a-eneb Moizez hag Aaron, o lavaroud :
3. Plijet gand Doue e vem bet maro en Ejipt : ha plijet gantañ e teujem da zizeria en distro vraz-mañ, ha n'ol lakaje ket da vond en douar-ze, gand aon na vem diskaret gand ar hleze, ha na ve kaset or gwragez hag or bugale e sklaverez. Ha n'eo ket gwell distrei d'an Ejipt ?
4. Hag i a lavaras an eil d'egile : Lakaom unan da benn deom, ha distroom d'an Ejipt.
5. Moizez hag Aaron o veza klevet kement-se, en em strinkas d'an douar dirag an oll strollad euz a vugale Izrael.

¹⁶⁹ a-barz : a-raog.

6. Hogen Jozef, mab Nun, ha Kaleb, mab Jefone, pere o-doa ivez ardamezet an douar-ze, a rogas o dillad,
7. Hag a lavaras da oll strollad bugale Izrael : An douar a behini on-eus greet an dro a zo mad-meurbed.
8. Mar deo trugarezuz an Aotrou en or heñver, ol lakay da vond e-barz, hag e roy deom an douar-ze, e pehini e red al lêz hag ar mel.
9. Na zavit ket a-eneb an Aotrou, ha n'ho-pezet ket a aon rag pobl an douar-ze ; rag ni a hell i lonka evel eun tamm bara : pellaet eo pep skoazell diouto ; ema an Aotrou ganeom ; n'ho-pezet ket a aon.
10. Pa harme an oll strollad, ha pa felle dezo o labeza, gloar an Aotrou en em ziskouezas war toenn arh ar gevredigez, dirag oll vugale Izrael.
11. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Beteg pegeid e tirogo ar bobl-se ahanon ? Beteg pegeid ne gredo ket din, goude an oll vurzudou em-eus greet dirazo ?
12. Bosenn eta a gasin dezo, hag o hasin da get : hogen me az lakay da benn en eur vroad vraz ha kreñvoh eged houmañ.
13. Ha Moizez a lavaras d'an Aotrou : Felloud a ra dit ma klevo an Ejiptianed, euz a-greiz pere eh-eus tennet ar bobl-mañ,
14. Hag ar re a chom er vro-mañ, pere o-deus klevet, Aotrou, penaoz emaut e-kreiz ar bobl-mañ, penaoz out gwelet eno dremm-oh-dremm, penaoz da goabrenn a ziwall anezo, ha penaoz e kerzez en o raog en eur peul koabr e-pad an deiz, hag en eur peul tan e-pad an noz :
15. Felloud a ra dit ma klevint penaoz eh-eus lazet ken aliez a dud evel eun den hepken, ha ma livirint :
16. Ne helle ket lakaad ar bobl da vond e-barz an douar en-doa touet ma roje dezañ : rag-se en-deus o lazet en distro.
17. Ra vezo eta diskouezet nerz an Aotrou, hervez ma eh-eus touet, o lavaroud :
18. An Aotrou a zo habask ha leun a drugarez ; lemel a ra ar fallagriezou hag ar gwallou ; ne lez digastiz den kabluz ebed ; emweloud a ra pehejou an tadou er vugale beteg an drede hag ar bevare gouenn.
19. Distaol, me az ped, pehed ar bobl-mañ, hervez ma'z eo braz da drugarez, hag evel ma out bet trugarezuz en he heñver abaoe ma eo deuet er-mêz euz an Ejipt beteg al leh-mañ.
20. Hag an Aotrou a lavaras : Distaolet em-eus dezo o fehed evel da her.
21. Beo on, hag an douar oll a vezo leun gand gloar an Aotrou.
22. Koulskoude ar re oll pere o-deus gwelet va meurdez, hag an aroueziou em-eus greet en Ejipt hag en distro, hag o-deus va zemptet beteg deg gwech, ha n'o-deus ket sentet ouz va mouez,
23. Ne welint ket an douar diwar-benn pehini em-eus touet d'o zadou ; hag hini euz ar re o-deus droug-pedet ganen ne welo anezañ.
24. Hogen e-keñver Kaleb, va zervijer, pehini, o veza leun euz a eur spered all, en-deus va heuliet, me her lakay da vond en douar-ze a behini en-deus greet an dro : hag e ouenn a vezo perhenn dezañ.
25. O veza ma chom an Amalesited hag ar Gananaed en traoniennou, savit ho kamp warhoaz, ha distroit d'an distro dre hent ar mor Ruz.
26. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez hag ouz Aaron, o lavaroud :
27. Beteg pegeid e krozo ar bobl fallagr-se em eneb ? Klevet em-eus klemmou bugale Izrael.
28. Lavar eta dezo : Beo on, eme an Aotrou ; evel ma em-eus ho klevet o lavaroud, e rin deoh.

29. Ho korvou maro a vezo gourvezet en distro-ze. C’hwi oll pere a zo bet niveret adaleg ugent vloaz hag ohpenn, hag hoh-eus krozet a-eneb din,

30. N’ez eot ket en douar, e pehini em-oa savet va dorn ho lakajen da chom, nemed Kaleb, mab Jefone, ha Jozue, mab Nan.

31. Hogen lakaad a rin da vond e-barz ho pugaligou, pere a dlee beza, war o lavar, preiz an enebourien ; evid ma welint an douar a zo bet displijet deoh.

32. Ho korvou maro a vezo gourvezet en distro.

33. Ho pugale a vezo o kantreal en distro e-pad daou-ugent vloaz, hag a zougo ho fallagriez-hu, ken na vezo bevezet korvou maro o zadou en distro,

34. Hervez an niver euz an daou-ugent devez e-pad pere hoh-eus ardamezet an douar-ze : eur bloaz a vezo niveret evid eun deiz. Koueza a ray eta warnoh e-pad daou-ugent vloaz ho fallagriezou, ha gouzoud a reot petra eo va veñjañs.

35. Rag evel em-eus e lavaret, e rin e-keñver ar bobl fallagr-se, pehini a zo savet em eneb : en distro-mañ e vezo kaset da get, hag e varvo.

36. Hogen an oll dud a oa bet kaset gand Moizez evid gweloud an douar, ha pere, o veza distroet, o-doa lakaet da groza en e eneb an oll bobl, o wallvruda an douar-ze evel eun douar fall,

37. A varvas, o veza bet skoet gand an Aotrou.

38. Hogen ne chomas beo nemed Jozue, mab Nun, ha Kaleb, mab Jefone, euz a gement a oa bet oh arvesti an douar.

39. Ha Moizez a lavaras kement-se da vugale Izrael, hag ar bobl a leñvas druz.

40. Hogen antronoz o veza savet mintin mad, e pignjont war lein ar menez hag e leverjont : Dare om da bigna war al leh a behini en-deus an Aotrou komzet deom ; rag pehet on-eus.

41. Ha Moizez a lavaras dezo : Perag, emezañ, e kerzit-hu a-eneb ger an Aotrou ? An dra ne zeuy ket da vad deoh.

42. Na bignit ket, (rag n’ema ket an Aotrou ganeoh, gand aon na veh diskaret dirag hoh enebourien).

43. An Amalesited hag ar Gananeed a zo dirazoh, hag e kouezot dindan o hleze, o veza n’eus ket fellet deoh senti oh an Aotrou, ha ne vezo ket an Aotrou ganeoh.

44. Hogen i, skoet a deñvalijenn, a bignas war lein ar menez. Koulskoude, arh kevredigez an Aotrou ha Moizez n’ez ejont ket er-mêz euz ar hamp.

45. An Amelisited hag ar Ganaaneed, pere a chome war ar menez, a zsikennas, en em daolas warnezo, o zrehas, hag a yeas war o lerh beteg Horma.

XV. Pennad.

Lezennou diwar-benn ar sakrifisou. Torrrer ar sabat.

1. An Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

2. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Pa viot eet da chom en douar a roin deoh,

3. Ha pa ginnigot d’an Aotrou pe eur sakrifis-losk, pe eur viktim o seveni ho kouestlou, pe o kinnig a-youl ho roou, pe o tevi en ho lidou braz kinnigou a hwez-vad d’an Aotrou, pe a ejenned, pe a zeñved ;

4. Piou bennag en-devezo lazet eur viktim, a ginnigo evid ar sakrifis-bleud, an degved lodenn euz a eun efi, glebiet gand eoul, hag en-devezo ar bevare lodenn euz a eun hin :

5. Hag e roy evid ar sakrifis-losk, pe evid ar viktim an heveleb ment a win evid braoued-kinnig.

6. Evid peb oan ha pep tourh e vezo kinniget e sakrifis daou zegved¹⁷⁰ bleud, glebiet gand an drede vent euz a eun hin a eoul :
7. Hag e roy evid braoued-kinnig an drede lodenn euz an heveleb ment, evel eun dra a hwez-vad d'an Aotrou.
8. Hogen pa ginnigi ejenned e sakrifis-losk, pe evel eun ostiv evid seveni eur gouestl, pe evid viktimou a beoh,
9. E roi evid peb ejenn tri degved bleud glebiet gand eun hanter hin a eoul :
10. Ha kemend-all a win e braoued-kinnig, evel eur hinnig a hwez-vad d'an Aotrou.
11. Evel-se e ri,
12. Evid peb ejenn, ha pep tourh, ha peb oan, ha peb menn-gavr.
13. Ar re euz ar vro kerkoulz hag an diavêzidi,
14. A ginnigo ar sakrifisou gand an heveleb lidou.
15. Eul lezenn hag eur varnedigez a vezo ken evidoh, kerkoulz hag evid an diavêzidi en ho pro.
16. An aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :
17. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo :
18. Pa viot eet en douar a roin deoh,
19. Ha pa ho-pezo debret euz a varaou ar vro-ze, e lakaot a-du ar previdi euz ho poued evid an Aotrou.
20. Evel ma likit a-du ar previdi euz ho leuriou,
21. Evel-se e root d'an Aotrou ar previdi euz ho toaz.
22. Ma fallit dre ziouiziegez da ober eun dra bennag euz an traou-ze en-deus lavaret an Aotrou da Voizez,
23. Hag en-deus gourhemennet deoh drezañ, adaleg an deiz ma en-deus deraouet rei e hourhemennou, hag abaoe ;
24. Ha ma he-deus an oll bobl anhounac'haet e ober, e kinnigo eul leue euz an tropell, evel eur sakrifis-losk euz a eur c'hwez-vad-meurbed d'an Aotrou, hag ar bleud kinnig, hag ar braoued kinnig, hervez al lidou, hag eur bouh evid ar pehed.
25. Hag ar beleg a bedo evid an oll strollad euz a vugale Izrael ; hag e vezo distaolet dezo, o veza n'o-deus ket pehet a-youl : koulskoude e kinnigint eur sakrifis-losk d'an Aotrou evito o-unan, hag evid o fehed, hag evid o diouiziegez.
26. Hag e vezo distaolet da oll bobl bugale Izrael, ha d'an diavêzidi a zo deuet da chom en o zouez ; rag eur pehed he-deus greet an oll bobl dre ziouiziegez.
27. Ma en-deus pehet eun den e-unan dre ziouiziegez, e kinnigo eur havr bloaz evid e behed :
28. Hag ar beleg a bedo evitañ, o veza ma en-deus pehet heb e houzoud dirag an Aotrou, an distaol a houlenno evitañ, hag e vezo disatolet dezañ.
29. Eun heveleb lezenn a vezo evid ar re o-devezo pehet dre ziouiziegez, ken evid tud ar vro, ken evid an dud a-ziavêz bro.
30. Hogen an hini en-devezo greet eur pehed bennag dre rogoni, ken ar broad, ken an diavêziad, a vezo kaset da get euz a-greiz e bobl, o veza ma eo en em zavet a-eneb an Aotrou.
31. Rag disprizet en-deus ger an Aotrou, ha torret eo bet gantañ e hourhemenn : rag-se e vezo kaset da get hag e tougo e fallagriez.
32. Hogen pa edo bugale Izrael en distro, e c'hoarvezas penaoz e kavjont eun den o keuneuta e deiz ar sabat :
33. Hag i a gasas anezañ dirag Moizez hag Aaron, ha dirag an oll bobl ;

¹⁷⁰ daou zegved : diou zegvedenn.

34. Hag e kasjont anezañ er vah, o veza ne ouient ket petra a rajent outañ.
35. Neuze an Aotrou a lavaras da Voizez : Ra vezo lakaet d'ar maro an den-ze ; ha ra vezo labezet gand an oll bobl er-mêz euz ar hamp.
36. Hag o veza e gaset er-mêz, e labezjont anezañ, hag e varvas, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou.
37. An Aotrou a lavaras ivez da Voizez :
38. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo lakaad pempillou ouz bevenn o mantellou, ha liammou glaz warnezo :
39. Evid pa welint kement-se, ma teuy da goun dezo euz a oll hourhemennou an Aotrou, ha ne heullint ket o mennoziou nag o daoulagad pere en em zaotr e meur a dra :
40. Hogen ma teuy en o eñvor gourhemennou an Aotrou, ma sevenint anezo, ha ma vezint sent d'o Doue.
41. Me eo an Aotrou ho Toue, pehini en-deus ho tennet euz a zouar an Ejipt, evid ma vijen Doue deoh.

XVI. Pennad.

Meur a hini a zav a-eneb Moizez hag Aaron.

1. Hogen neuze Kore, mab Isaar, mab Kaat, mab Levi ; ha Datan hag Abiron, mibien Eliab, hag Hon, mab Felet, unan euz a vibien Ruben ;
2. A zavas a-eneb Moizez gand daou-hant hanter-kant den all euz a vugale Izrael, euz ar re genta er sinagog, ha pere, e amzer ar strolladou, a oa galvet dre o anioiu.
3. Ha goude ma oent savet a-eneb Moizez hag Aaron, e leverjont dezo : Ra vezo a-walh deoh ma'z eo an oll bobl-mañ eur bobl a zent, ha ma ema an Aotrou enno. Perag e savit-hu dreist pobl an Aotrou ?
4. Pa glevas Moizez kement-se, en em daolas war e henou d'an douar :
5. Hag eñ o komz ouz Kore hag ouz ar re a oa gantañ : Warhoaz vintin, emezañ, an Aotrou a roy da anaoud ar re pere a zo a zo dezañ, hag a unvano gantañ ar re a zo sent ; hag ar re en-deus dilennet a dostay outañ.
6. Grit eta kement-mañ : Ra gemero pep hini e ezañsouer, te, Kore, hag ar re a zo ganez.
7. Hag o veza warhoaz kemeret tan, e lakaot ezañs warnezañ dirag an Aotrou : ha piou bennag a vezo bet dilennet gand an Aotrou, hennez a vezo sant. En em zavel kalz a rit, mibien Levi.
8. Lavaroud a reas c'hoaz da Gore :Selaouit, mibien Levi.
9. Ha nebeud a dra eo a gav deoh en-defe Doue Izrael ho rannet euz an oll bobl, hag hoh unvanet gantañ evid e zervija e lid an tabernakl, hag evid sevel dirag an oll bobl, oh ober ho karg ?
10. Hag evid-se eo en-deus da lakaet da dostaad outañ, te ha da oll vreudeur mibien Levi, evid ma aloubot ivez ar velegiez vraz,
11. Ha ma savo hoh oll dud a-eneb an Aotrou ? Rag petra eo Aaron evid ma krozfeh en e eneb ?
12. Moizez eta a gasas da hervel Datan hag Abiron, mibien Eliab. Hag ar re-mañ a lavaras : N'ez aim ket.
13. Ha n'eo ket a-walh dit beza ol lakaet er-mêz euz an douar e pehini e rede al lêz hag ar mel, evid ol lakaad da vervel en distro, heb dond d'on aotrounia¹⁷¹ ?

¹⁷¹ d'on aotrounia : da veza mestr warnom.

14. Or haset eh-eus evid gwir en eun douar e pehini e red steriou lêz ha mel, hag eh-eus roet deom e kerz parkou ha gwininennou : ha felloud a ra dit c'hoaz tenna on daoulagad euz or penn ? N'ez aim ket.

15. Moizez o veza savet droug ennañ, a lavaras d'an Aotrou : Na zell ket ouz o sakrifisou : te a oar penaoz n'am-eus biskoaz degemeret eun azenig zoken diganto, ha n'em-eus glaharet hini anezo.

16. Neuze e lavaras da Gore : En em likit warhoaz dirag an Aotrou, te ha da oll strollad en eun tu, hag Aaron en eun tu all.

17. Kemerit pep hini hoh ezañsouerou, ha likit ezañs enno o kinniga d'an Aotrou deg esañsouer ha daouzeg-ugent¹⁷² ; dalhet ivez Aaron e esañsouer.

18. Pa o-doe greet kement-se dirag Moizez hag Aaron,

19. Ha pa o-doe dastumet an oll bobl rag-eneb dezo, e-tal dor an tabernakl, gloar an Aotrou en em ziskouezas dezo oll.

20. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez hag Aaron, o lavaroud :

21. En em rannit euz a greiz ar strollad-se, evid ma o hollin war eun dro.

22. Ar re-mañ en em strinkas war o genou d'an douar, hag a lavaras : O ! Doue ollhalloudeg, Doue ar sperejou hag an oll gig, ha sevel a ray droug ennout a-eneb an oll evid pehed unan hepken ?

23. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez :

24. Gourhemenn d'an oll bobl pellaad diogh teltou Kore, ha Datan, hag Abiron.

25. Moizez eta a zavas, hag a yeas etrezeg Datan hag Abiron : hag henaoured Izrael a yeas war e lerh.

26. Hag eñ a lavaras d'ar re a oa dastumet eno : Pellait diogh teltou an dud fallagr-se, ha na likit ket ho taouarn war netra euz a gement a zo dezo, gand aon na veh strobet en o fehejou.

27. Ha pa oent pellaet diogh teltou an dud fallagr-se, Datan hag Abiron o veza deuet er-mêz en em zalhe e-tal dor o zeltou, gand o gwragez, hag o bugale, hag o oll dud.

28. Ha Moizez a lavaras : Diogh kement-mañ e ouiot penaoz eo an Aotrou en-deus va haset evid ober kement a welit, ha penaoz n'eo ket me em-eus e hreet euz va mennoz va-unan.

29. Ma varv ar re-mañ euz a eur maro paot e-touez an dud, ha mar deu ar hleñved da staga enno, evel ma'z a da staga er re all, n'eo ket an Aotrou en-deus va haset.

30. Hogen mar gra an Aotrou eun dra nevez, ha mar deu an douar da zigeri, ha d'o lonka i ha kement a zo dezo ; ha ma tiskennont ez-veo en ivern, e ouiot penaoz o-deus droug-pedet gand an Aotrou.

31. Kerkent eta m'en-doe peurlavaret ar homzou-mañ, an douar a fraillas dindan o zreid ;

32. Hag o tigeri dindanno, e lonkas anezo, gand o zeltou, ha kement a oa dezo.

33. Hag i, o veza goloet gand an douar, a ziskennas ez-veo en ivern ; hag e tremenjont euz a greiz ar bobl.

34. Hogen oll vugale Izrael, pere a oa eno war-dro, a dehas pa glevjont garmou ar re a varve, o lavaroud : Krenom na zeufe ivez an douar d'ol lonka.

35. Hogen eun tan kaset gand an Aotrou, a lazas daou-hant hanter-kant den, pere a ginnige esañs.

36. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

37. Kemenn da Eleazar, mab Abiron, kemeroud an ezañsouerou a zo chomet en entan, ha teurel an tan a zo enno tu-mañ ha tu-hont : rag santellaet int bet.

¹⁷² deg esañsouer ha daouzeg-ugent : iskiz ; daou hant-hanter-kant.

38. E maro ar beherien : ha graet ganto taolennou a stago ouz an aoter, o veza ma eo bet benniget enno ezañs d'an Aotrou, ha ma int bet santellaet, ha ma vezint da arouez ha da dest da vugale Izrael.

39. Eleazar ar beleg a gemeras eta an ezañsouerou arem, e pere ar re a oa bet losket gand an entan o-doa kinniget ezañs ; hag e reas taolennou ganto, hag o stagas ouz an aotzer ;

40. Evid ma vijent pelloh da gelenn da vugale Izrael ; evid na dostay den diavêziad ebed, nag hini ha na vezo ket euz a ouenn Aaron da ginnig ezañs d'an Aotrou, gand aon na houzañvje evel m'en-deus gouzañvet Kore, hag e oll strollad, hervez m'en-doa an Aotrou e lavaret da Voizez.

41. Antronoz oll strollad bugale Izrael a grozas a-eneb Moizez hag Aaron, o lavaroud : C'hwi hoh-eus lazet pobl an Aotrou.

42. Hag o veza ma saved eun dispah, ha ma kreske ar savar,

43. Moizez hag Aaron a dehas etrezeg tabernakl ar gevredigez. Ha pa oent eet e-barz, ar goabrenn o goloas, ha gloar an Aotrou en em ziskouezas.

44. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez :

45. En em dennit euz a greiz ar strollad tud-se ; mond a ran bremañ d'o laza oll. Neuze o veza o-daou en em strinket d'an douar,

46. E lavaras Moizez da Aaron : Kemer da ezañsouer ; laka ennañ tan euz an aoter, ha taol ezañs warnezañ ; ha kee buan etrezeg ar bobl evid pedi evito ; rag a-vremañ an Aotrou a zo droug ennañ, hag ar gouli a zo o vond da darza.

47. Aaron a reas kement-se, hag a redas e-kreiz ar bobl a zeraoue beza gwastet gand an tan ; hag e kinnigas an ezañs :

48. Hag oh en em zerhel en e zav etre ar re varo hag ar re veo, e pedas evid ar bobl, hag ar gouli a ehanas.

49. Hogen ar re a oe skoet, a oe euz a bevarzeg mil den ha seiz-kant, heb niveri ar re a oa bet marvet e dispah Kore.

50. Hag Aaron a zistroas da gavoud Moizez e-tal dor tabernakl ar gevredigez, goude ma oa arzavet ar maro.

XVII. Pennad.

Ar velegiez kreteet e Aaron gand eur burzud.

1. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

2. Komz ouz bugale Izrael, ha kemer diganto gwialennou hervez o breuriezou, daouzeg gwialenn, evid oll briñsed ar breuriezou ; hag e skrivi ano pep hini war e wialenn.

3. Hogen ano Aaron a vezo skrivet war wialenn breuriez Levi, ha peb breuriez a vezo skrivet war beb gwialenn.

4. O lakaad a ri e tabernakl ar gevredigez, dirag an testeni, e peleh e komzin ouzit.

5. Ar wialenn euz an hini anezo em-bezo dibabet a vleunio : hag evel-se e tiarbennin klemmou bugale Izrael, hag o hrozou en hoh eneb.

6. Ha Moizez a gomzas ouz bugale Izrael : hag an oll briñsed a roas pep hini e wialenn hervez e vreuriez : hag en em gavas daouzeg gwialenn heb gwialenn Aaron.

7. Moizez o veza o lakaet dirag an Aotrou e tabernakl an testeni,

8. Antronoz pa zistroas, a gavas penaoz gwialenn Aaron, euz a di Levi, a oa bet benniget ; ha penaoz goude beza deuet broñs warnezi, e oa savet bleun pere, pa oe digoret an deliou, en em droas e alamandez.

9. Moizez a gemeras eta an oll wial euz a zirag an Aotrou, hag o dougas da oll vugale Izrael : hag i a welas hag a gemeras pep hini e wialenn.

10. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Doug adarre gwialenn Aaron e tabernakl an testeni, evid ma vezo miret eno evel eun arouez euz a zispah bugale Izrael, ha ma ehano o hlemmou em eneb, gand aon na varvjent.

11. Ha Moizez a reas evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ.

12. Hogen bugale Izrael a lavaras da Voizez : Setu om bevezet oll, ha ma'z eom da get.

13. Piou bennag a dosta ouz tabernakl an Aotrou, a varv. Ha ni a dle beza kaset da get beteg an diweza ?

XVIII. Pennad.

Kargou ar veleien hag al Levited. Previdi ha deog a dleer rei dezo.

1. Hag an Aotrou a lavaras da Aaron : Te ha da vibien ; ha ti da dad ganez, a zougo fallagriez a-eneb ar santuar : ha te ha da vibien ganez, a zougo pehejou da velegiez.

2. Hogen kemer ganez da vreudeur euz a vreuriez Levi, hag oll dud da dad ; ha ra skoazellint ha ra zervijint ahanout : hogen te ha da vibien, ho karg a reot e tabernakl an testeni.

3. Al Levited a vezo dare bepred da ober da hourhemennou, ha kement a vezo da ober en tabernakl ; en heveleb doare koulskoude na dostaint ket ouz listri ar santuar, nag ouz an aoter, gand aon na varvjeh, hag i ganeoh.

4. Hogen ra vezint ganez, ha ra ziwallint ouz an tabernakl, hag ouz sevenidigez e oll lidou. Na en em vesket ket ganeoh diavêziad ebed.

5. Diwallit ouz ar santuar, ha grit servij an aoter ; gand aon na zavje droug ennon a-eneb bugale Izrael.

6. Roet em-eus deoh al Levited, ho preudeur, euz a douez bugale Izrael, hag em-eus o roet evel eur ro d'an Aotrou, evid ma vezo en o harg servij an tabernakl.

7. Hogen te ha da vibien, mirit ho pelegiez ha kement a zell ouz lid an aoter, hag a zo en diabarz euz ar ouel, a vezo e karg ar veleien : mar tosta eun diavêziad bennag outo, e vezo lazet.

8. Hag an Aotrou a gomzas ouz Aaron : Setu em-eus roet dit va frevidiou da vired. Roet em-eus dit ha d'az mibien evid ar garg a veleg, dre eul lezenn beurbaduz, kement a zo kinniget din gand bugale Izrael.

9. Setu eta petra a gemeri euz an traou a vezo bet santellaet ha kinniget d'an Aotrou. Kement kinnig, kement sakrifis, ha kement tra a vez roet din evid ar pehed hag evid an droug, hag a zeu da veza santel-braz, a vezo evidout hag evid da vibien.

10. Er santuar e tebri anezañ : ar wazed hepken a zebro euz anezañ ; rag gouestlet eo dit.

11. Hogen e-keñver ar previdiou a ouestlo pe a ginnigo din bugale Izrael, e roin anezo dit, ha d'az mibien, ha d'az merhed dre eur gwir peurbaduz : neb a zo glan en da di a zebro euz anezañ.

12. Roet em-eus dit ar gwella euz an eoul, euz ar gwin, hag euz an ed, ha kement kenta-frouez a ginniger d'an Aotrou.

13. An oll genta-frouez a zegas an douar, hag a vez kinniget d'an Aotrou, a zegouezo dit : neb a zo glan en da di a zebro anezo.

14. Kement a ginnigo bugale Izrael evid seveni eur gouestl, a vezo evidout.

15. Kement a zeu da genta euz a gov pep kig, hag a vezo kinniget d'an Aotrou, ken euz an dud, ken euz al loened, a vezo en da wir : en heveleb doare koulskoude ma tegemeri ar feur evid ar henta-ganet euz an den, hag e liki da zaspren kement loen dihlan ;

16. Ar henta-ganet euz an den a vezo dasprenet a-benn eur miz, gand pemp sikl arhant, hervez pouez ar santuar. Ugent obolenn a dalv eur sikl.

17. Hogen ne liki ket da zasprena ar henta-ganet euz an ejenn, hag euz an dañvad hag euz ar havr, o veza ma int gouestlet d'an Aotrou : skuilla a ri hepken o gwad war an aoter, hag e tevi o lard evel eur c'hwez-vad d'an Aotrou.

18. Hogen o hig a zegouezo dit, evel ar poull-kalon a zo gouestlet, hag ar skoaz dehou a vezo dit.

19. Roet em-eus dit ha d'az mibien ha d'az merhed, dre eur gwir peurbaduz, an oll brevidiou euz ar santuar, a ginnig bugale Izrael d'an Aotrou. Eur gevredigez wallenn¹⁷³ ha peurbaduz eo dirag an Aotrou, evidout hag evid da vibien.

20. Hag an Aotrou a lavaras da Aaron : n'ho-pezo netra en o douar, ha n'ho-pezo lod ebed en o mesk : me eo da lod ha da zegouez e-kreiz bugale Izrael.

21. Hogen da vibien Levi em-eus roet e kerz an oll zeogou euz a Izrael, evid ar servij a reont gand ar garg o-deus e tabernakl ar gevredigez.

22. Evid na dostay mui bugale Izrael ouz an tabernakl, ha na raint ket eur pehed a rofe dezo ar maro.

23. Ra zervijo ahanon mibien Levi hepken en tabernakl, ha ra zougint pehejou ar bobl. Eul lezenn beurbaduz e vezo en ho kouennou. N'o-devezo netra all ebed.

24. Hag a-walh e vezo dezo kinnig an deogou em-eus rannet evid o ezommou, ha kement a zo red dezo.

25. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

26. Kemenn ha ro d'anaoud d'al Levited : Pa ho-pezo bet digand bugale Izrael an deogou em-eus roet deoh, kinnig ar previdi anezo d'an Aotrou, da lavaroud eo, an degved lodenn euz an deog ;

27. Evid ma vezo niveret deoh evel kinnig ar henta-frouez, ken evid an ed, ken evid ar gwin :

28. Hag euz a gement a vezo roet deoh, kinnig an deog d'an Aotrou, ha roit eñ da Aaron ar beleg-braz.

29. Kement a ginnigot euz an deogou, hag a rannot evid beza roet d'an Aotrou, a vezo ar gwella hag ar c'hweka.

30. Lavaroud a ri c'hoaz dezo : Mar kinnig ar gwella hag ar c'hweka euz an deogou, e vezo niveret deoh evel ar henta-frouez euz hoh ed hag euz ho kwin.

31. Hag c'hwi e zebro e peb leh, c'hwi hag hoh oll dud ; o veza ma eo ar gopr euz ar servij a rit e tabernakl an testeni.

32. Ha ne behot ket war gement-mañ, o viroud evidoh ar gwella hag al larta, gand aon na ve saotret ganeoh kinnigou bugale Izrael, ha ne varvjuh.

XIX. Pennad.

Dour a zihaouidigez.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez hag Aaron, o lavaroud :

¹⁷³ wallenn : ? : n'eus ket tu da derri.

2. Setu lid ar viktim a zo bet gourhemennet gand an Aotrou : Kemenn da vugale Izrael degas dit eur vuoh hell, euz a eun oad klok, e pehini ne vezo briz ebed, ha ne vezo ket bet ar yeo warnezi :
3. Ha c’hwi he roy da Eleazar ar beleg, pehini o veza he haset er-mêz euz ar hamp, a lazo anezi dirag an oll :
4. Hag o souba e viz e gwad ar vuoh, e sparlo seiz gwech etrezeg dor an tabernakl.
5. Hag eñ he losko dirag an oll, o tevi gand tan ken he hrohenn hag he hig, ken he gwad hag he beuzel.
6. Ar beleg a daolo ivez en tan a zevo ar vuoh, koad sedr, ha sikadez, ha tane diou wech livet.
7. Ha neuze goude oll, goude beza gwalhet e zillad hag e gorr, e tistroy d’ar hamp, hag e vezo dihlan beteg ar pardaez.
8. Hogen an hini en-devezo losket ar vuoh a walho ivez e zillad hag e gorr, hag e vezo dihlan beteg ar pardaez.
9. Hogen eun den glan a zastumo ludu ar vuoh, hag a skigno anezo er-mêz euz ar hamp en eul leh glan-braz ; evid ma vezo miret gand oll vugale Izrael, ha ma vezint dezo evel dour a sparferez¹⁷⁴ ; o veza ma eo bet devet ar vuoh evid ar pehed.
10. Ha pa en-devezo gwalhet e zillad, an hini en-devezo douget ludu ar vuoh, a vezo dihlan beteg ar pardaez. Kement-mañ a vezo santel, dre eur gwir peurbaduz, da vugale Izrael ha d’an diavêzidi a chom en o zouez.
11. Neb en-devezo stoket ouz korv maro eun den, hag a vezo deuet evid se da veza dihlan e-pad seiz devez ;
12. A vezo sparfet gand an dour-ze en trede hag er seizved devez, hag evel-se e vezo glannaet. Ma ne vez ket sparfet en trede deiz, ne hello ket beza glannaet er seizved deiz.
13. Piou bennag en-devezo stoket ouz korv maro eun den, ha ne vezo ket bet sparfet gand ar hemmesk-se, hennez a zaotro tabernakl an Aotrou, hag e tizerio euz a-greiz Izrael : dihlan e vezo, o veza n’eo ket bet glannaet gand dour an dihaouidigez ; hag e hudurnez a chomo warnezañ.
14. Setu al lezenn evid an den a varv en e delt : kement hini a yelo en e delt, ha kement lestr a vezo ennañ, a vezo dihlan e-pad seiz devez.
15. Al lestr pehini n’en-devezo ket a holher, pe na vezo ket liammet war-horre, a vezo dihlan.
16. Mar deu eur re da steki en eur park ouz korv maro eun den a vezo bet lazet, pe a vezo en em lazet e-unan ; pe mar stok ouz eun askorn anezañ, pe ouz e vez, a vezo dihlan e-pad seiz devez.
17. Kemeroud a raint euz al ludu losket evid ar pehed, hag e lakaint dour-red warnezañ en eul lestr ;
18. Hag eun den glan o veza soubet sikadez ennañ, e sparfo gantañ an oll delt, hag an oll arrebeuri, hag an dud a vezo bet saotret gand an dihlanded-se.
19. Hag evel-se an hini glan a skarzo an hini dihlan d’an trede ha d’ar seizved deiz ; hag an hini a vezo bet skarz et er seizved deiz, en em walho hag a walho e zillad ; hag e vezo dihlan beetg ar pardaez.
20. Mar bez eur re ha n’eo ket bet skarz et en doare-ze, e vezo tennet e vuhez euz a-greiz ar strollad : o veza ma en-deus saotret santuar an Aotrou, ha n’eo ket bet sparfet gand an dour a zihaouidigez, e vezo dihlan beteg ar pardaez.

¹⁷⁴ dour a sparferez : an dour strinket gand ar sparf (ar vaz dour benniget).

21. Ar helenn-ze a vezo eul lezenn da viken. An hini en-devezo sparfet an dour, a walho ivez e zillad. Kement hini en-devezo stoket ouz an dour a zihaouidigez, a vezo dihlan beteg ar pardaez.

22. Neb a stoko ouz eun dra hag eñ dihlan, e lakay da veza dihlan : hag an hini en-devezo stoket ouz unan euz an traou-ze, a vezo dihlan beteg ar pardaez.

XX . Pennad.

Maro Mari, c'hoar Moizez. Maro Aaron, e vreur.

1. Bugale Izrael hag an oll bobl a zeuas e distro Sin er miz kenta : hag ar bobl a chomas e Kadez. Ha Mari a varvas eno, hag a oe beziet en heveleb leh.

2. Hag an dour eno a oe diouer anezañ e-touez ar bobl ; hag en em zavjont a-eneb Moizez hag Aaron.

3. Hag o veza en em zispahet, e leverjont : A-youl e vem bet maro gand or breudeur dirag an Aotrou !

4. Perag hoh-eus-hu kaset pobl an Aotrou en distro, evid ma varvjem, ni hag ol loened ?

5. Perag eh-eus-te on tennet euz an Ejipt, hag on degaset el leh fall-mañ, e pehini n'heller ket hada : pehini ea laka ket da zavel na fiez, na gwini, nag avalou-grenad ; e pehini zoken ne gaver ket a zour evid eva ?

6. Moizez hag Aaron o veza en em dennet euz a douez ar bobl, a yeas e tabernakl ar gevredigez ; hag o veza en em strinket war o genou d'an douar, e harmjont ouz an Aotrou, hag e leverjont dezañ : Aotrou Doue, selaou garm ar bobl-mañ, ha digor da deñzor dezo, eur feunteun dour-red, evid ma'h ehano o hroz pa o-devezo torret o zehed. Ha gloar an Aotrou en em ziskouezas warnezo.

7. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

8. Kemer ar wialenn, ha dastum ar bobl, te hag Aaron da vreur, ha komzit ouz ar mên dirazo, hag eñ a roy doureier. Ha pa'z-pezo tennet dour euz ar mên, ar bobl oll a evo hag o loened.

9. Moizez a gemeras eta ar wialenn a oa dirag an Aotrou, evel m'en-doa e hourhemennet dezañ ;

10. Hag o veza dastumet ar bobl dirag ar mên, e lavaras dezo : Selaouit, tud amzent ha diskredig : ha ni a hello lakaad dour da zilammoud deoh euz ar mên-ze ?

11. Ha p'en-doe Moizez savet e zorn, ha skoet diou wech war ar mên gand e wialenn, e tilmmas kalz a zour, en heveleb doare m'en-doe ar bobl da eva, hag al loened ivez.

12. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez ha da Aaron : O veza n'hoh-eus ket kredet din, ha n'hoh-eus ket va zantellaet dirag bugale Izrael, ne lakaot ket ar bobl-mañ da vond e-barz an douar a roin dezo.

13. Hennez eo dour an enebiez, e peleh bugale Izrael o-deus krozet a-eneb an Aotrou, hag e peleh eo en em zantellaet en o hreiz.

14. Hogen Moizez a gasas euz a Gadez kannaded da roue Edom, evid lavaroud dezañ : Setu petra a gemenn dit da vreur Izrael : te a oar pegement a boan on-eus bet :

15. Penaoz eo bet diskennet on tadou en Ejipt, hag om chomet eno pell amzer ; ha penaoz an Ejiptianed o-deus or glaharet, ni hag on tadou ;

16. Ha penaoz o veza garmet etrezeg an Aotrou, en-deus klevet ouzom, hag en-deus kaset e Êl, pehini en-deus on tennet euz an Ejipt. Emaom bremañ e kêr Gadez, pehini a zo war harzou da rouantelez.

17. Da bedi stard a reom d'ol lezel da dremen dre da vro. N'ez aim ket a-dreuz d'ar parkeier, na d'ar gwiniennou ; ne evim ket an dour euz ho puñsou ; hogen mond a raim dre an hent braz, heb distrei nag a-zehou nag a-gleiz, beteg ma or-bo treuzet da harzou.

18. Hag Edom a lavaras dezañ : Ne dremeni ket dre va douarou, pe ez in gand va armou en da eneb.

19. Ha bugale Izrael a lavaras : Dre an hent-meur ez aim : ha ma evom euz da zour-te, ni hag ol loened, e roim dit ar pezh a zo red : ne vezo ket a enebiez evid an digoll : ol lez hepken da dremen heb harz.

20. Hag eñ a lavaras : Ne dremeni ket. Ha raktal e kerzas en o raog gand eul lod braz a dud, hag eun arme greñv,

21. Ha ne fellas ket dezañ selaou Izrael a bede anezañ evid ma o lezje da dremen dre o bro : rag-se Izrael a bellaas diou e zouarou.

22. Ha p'o-doe savet o hamp euz a Gadez, e teujont da venez Hor, a zo e-barz bro Edom.

23. Hag eno e komzas An Aotrou ouz Moizez :

24. Ra'z ay, emezañ, Aaron da gavoud e bobl ; rag n'ez ay ket en douar em-eus roet da vugale Izrael, o veza ma eo bet diskredig d'am ger, el leh anvet Doureier an enebiez.

25. Kemer Aaron hag e vab gantañ, ha kas i war menez Hor.

26. Diwiska a ri e zae d'an tad, hag e wiski anezi da Eleazar, e vab : Aaron a vezo dastumet gand e dadou hag e varvo eno.

27. Moizez a reas evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou : hag i a bignas war menez Hor, dirag an oll bobl.

28. Ha goude m'en-doe diwisket e zae da Aaron, e wiskas anezi da Eleazar e vab.

29. Aaron o veza maro war lein ar menez, e tiskennas Moizez gand Eleazar.

30. Hogen an oll bobl o weloud penaoz e oa maro Aaron, a ouelas warnezañ e-pad tregont devez, en oll diegeziou.

XXI. Pennad.

Kroz nevez an Izraelited. Naer arem.

1. Pa glevas Arad, roue ar Gananeed, pehini a chome war-zu ar hreisteiz, penaoz e oa deuet Izrael dre hent ar Spierien, e stourmas outañ, hag o veza e drehet, e kasas gantañ an diwisk anezo.

2. Hogen Izrael oh en em ouestla d'an Aotrou gand eul le, a lavaras : Ma lakaez ar bobl-se etre va daouarn, e wastin he hêriou.

3. Hga an Aotrou a glevas ouz pedennou Izrael, hag a lakaas ar Gananeed etre e zaouarn, goude beza o lazet, ha dismantret o hêriou : hag eñ a halvas al leh-se Horma, da lavaroud eo, Anaoue.

4. Hogen i a yeas euz a Venez Hor dre an hent a gas d'ar mor Ruz, evid mond war-dro da zouar Edom. Hga e teraouas ar bobl en em zoania gand an hent ha gand al labour.

5. Hag o komz ouz Doue ha Moizez, e lavaras : Perag eh-eus-te on tennet euz an Ejipt, evid ma varvjem en distro ? Bara on-eus ezomm, n'on-eus ket a zour. Or halon he-deus heug oh ar boued dister-ze.

6. Rag-se an Aotrou a gasas ouz ar bobl naered tanuz, ha kalz anezo o veza gloazet pe lazet ganto,

7. E teujont da gaoud Moizez, hag e leverjont dezañ : Pehet on-eus o veza ma on-eus komzet a-eneb an Aotrou hag en da eneb-te : ped eñ ma tenno an naered-se euz or hreiz. Moizez a bedas eta evid ar bobl.
8. Hag an Aotrou a lavaraz dezañ : Gra eun naer arem, ha laka hi evid arouez : neb a vezo bet flemmet hag a zello outi, a vevo.
9. Moizez a reas eta eun naer arem, hag e lakaas anezi evid arouez : neb a oa bet flemmet hag a zelle outi a zeue yah.
10. Bugale Izrael o veza eet kuit ahano, a stegnas o hamp e Obot.
11. Hag o veza eet kuit ahano, e tisplegjont o zellou e Jeabarim, en distro a zell ouz Moab war-zu ar sav-heol.
12. Hag o veza savet o hamp ahano, e teujont da froud Zared ;
13. Hag o veza lezet ar hamp-se, e tisplegjont o zeltou e-tal Arnon, a zo en distro, hag a sko war harzou an Amorreed. Rag Aaron a zo war harzou Moab, hag a rann ar Vohabited euz an Amorreed.
14. Ahano eo, eo bet lavaret e levr brezelioù an Aotrou : Evel ma en-deus greet ar mor Ruz, evel-se e ray e froudennou Arnon.
15. Kerreg ar froudennou a zo en em izellaet evid diskenn etrezeg Ar ha chom a-zav war harzou ar Vohabited.
16. Hag i o tond euz al leh-se, e oe gwelet eur puñs, diwar-benn pehini e komzas an Aotrou ouz Moizez, o lavaroud : Dastum ar bobl, hag e roin dour dezi.
17. Neuze Izrael a ganas ar ganaouenn-mañ : Ra bigno ar puñs. Kana a reent oll war eun dro.
18. Ar puñs eo o-deus toullet ar briñsed, hag o-deus aozet pennou ar bobl dre urz an hini en-deus roet al lezenn, ha gand o bizier. Euz an distro ez ejont da Vattana ;
19. Euz a Vattan da Nahaliel : euz a Nahaliel da Vamot.
20. Euz a Vamot ez ejont d'eun draonienn a zo e bro Moab, e lein menez Fasga a zell ouz an distro.
21. Hogen Izrael a gasas kannaded da Zehon, roue an Amorreed, evid lavaroud dezañ :
22. Va lez da vond dre da zouar : ne zistroim ket dre da barkou na dre da winiennou ; ne evim ket a zour euz da buñsou ; dre an hent braz e kerzim, ken n'or-bezo tremenet da harzou.
23. Sebon ne fellas ket dezañ lezel Izrael da vond dre e vro ; hag o veza zoken dastumet e arme, ez eas d'e ziarbenn d'an distro, e teuas da Jasa, hag en em gannas ouz Izrael.
24. Hogen Izrael hen diskolpas gand ar hleze, hag a gemeras e vro, adaleg Arnon beteg Jebok, ha beteg bugale Ammon : rag harzou an Ammonited a oa diwallet gand gwikadellou kreñv.
25. Izrael a gemeras eta e oll gêriou, hag a chomas e kêriou an Amorreed, da lavaroud eo, e Hesebon hag en e vourhiou.
26. Rag kêr Hesebon a oa da Zebon, roue an Amorreed, pehini a oa en em gannet ouz roue Moab, hag en-doa kemeret an oll zouar a oa en e gerz, beteg Arnon.
27. Dre ze eo e leverer dre eul lavar paot : Deuit da Hesebon, ra vezo diazezet, ra vezo savet kêr Sehon.
28. Tan a zo savet euz a Hesebon, flamm a zo deuet euz a gêr Sehon, ha lonket eo bet gantañ Ar ar Vohabited, hag ar re a chome war al lehiou uhel euz an Arnon.
29. Gwa te, Moab ; kollet out, pobl Kamos. Lezet he-deus he mibien da dehoud, hag he merhed da veza sklavezad da Zehon, roue an Amorreed.
30. Torret eo bet o yeo adaleg Hesebon beteg Dibon. Skuiz o tehoud int deuet da Nofe, ha beteg Medaba.

31. Izrael a chomas eta e douar an Amorreed.

32. Ha Moizez a gasas tud evid anaoud bro Jazer ; hag i a gemeras he bourhiou, hag ar re a chome enno.

33. Hag i a zistroas, hag a bignas dre an hent a gas da Vasan ; hag Og, roue Basan, a zeuas d'o diarbenna gand e oll bobl, evid en em ganna ganto e Edrai.

34. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : N'az-pezh ket a aon razañ, rag e lakaet em-eus etre da zaouarn, eñ hag e oll bobl, hag e oll zouar : hag e ri en e geñver evel ma eh-eus greet e-keñver Sehon, roue an Amorreed, pehini a chome e Hesebon.

35. E ziskolpa a rejont eta, eñ hag e vibien, hag e oll bobl, heb ma chomas hini anezo : hag i a gemeras e oll vro.

XXII. Pennad.

Balak a halv Balaam. Azen Balaam a gomz.

1. Ha bugale Izrael o veza eet kuit ahano, a zisplegas o zeltou e kompezennou Moab, e-tal ar Jourdan, en tu all da behini ema Jeriko.

2. Hogen Balak, mab Sefor, o weloud petra en-doa greet Izrael d'an Amorreed,

3. Ha penaoz ar Voabited o-doa aon vraz rag ar bobl-se, ha na helljent ket stourm outo.

4. E lavaras da henaoured Madian : Ar bobl-se a gaso da get ar re oll a chom endro deom, e-giz ma teu an ejenn da beuri ar yeot beteg ar gwrizioù. Balak a oa roue e Moab en amzer-ze.

5. Kannaded a gasas da Valaam, mab Beor, an diouganer, pehini a chome e-barz ster douar bugale Ammon, evid e gerhoud, ha lavaroud dezañ : Setu eur bobl a zo deuet euz an Ejipt, a holo gorre an douar, hag en-deus dipeget e deltou rag-eneb din.

6. Deus eta, ha taol da valloz war ar bobl-se ; rag kreñvoh egedon eo ; ma welin ha me a hello en eun doare bennag he hanna hag he has kuit diwar va douar : rag me a oar penaoz an hini a vennigi a vezo benniget, hag an hini war pehini az-pezo taolet ar valloz a vezo milliget.

7. Ar re goz euz a Voab, hag henaoured Madian a yeas eta, hag en o daouarn gopr an diouganerez. Ha pa oent eet da gaoud Balaam, hag o-doe lavaret dezañ oll heriou Balak :

8. E lavaras-eñ : Chomit amañ henez, ha me a roy da anaoud deoh ar pezh en-devezo lavaret an Aotrou din. Ar re-mañ o veza chomet e ti Balaam, e teuas Doue, hag e lavaras dezañ :

9. Petra a fell d'an dud-se a zo en da di ?

10. Ha Balaam a lavaras da Zoue : Balak, mab Sefor, roue ar Voabited, en-deus o haset,

11. Da lavaroud din : Setu eur bobl a zo deuet euz an Ejipt, a holo gorre an douar : deus ha taol da valloz warnezi, ma welin ha me a hello en eun doare bennag he hanna hag he has kuit.

12. Ha Doue a lavaras da Valaam : N'ez a ket ganto, ha na villig ket ar bobl-se ; rag benniget eo.

13. Balaam o veza savet dioh ar mintin a lavaras d'ar briñsed : It d'ho pro ; rag an Aotrou en-deus miret ouzin n'ez ajen ganeoh.

14. Ar briñsed o veza distroet, a lavaras da Valak : N'eo ket fellet da Valaam dond ganeom.

15. Neuze Balak a gasas dezañ a-nevez kalz mui a gannaded, hag i brudetoh eged ar re genta.

16. Pa oe deuet ar re-mañ etrezeg Balaam, e leverjont dezañ : Setu petra a lavar Balak, mab Sefor ; Na zale ket da zond d'am havoud.

17. Dare on d'az enori, ha kement a fello dit a roin dit : deus, ha taol da valloz war ar bobl-se.

18. Ha Balaam a lavaras : Ha pa rofe Balak din leiz e di a arhant hag a aour, ne hellfen ket trei ger an Aotrou va Doue, evid lavaroud pe muih, pe nebeutoh

19. Me ho ped da chom c'hoaz an noz-mañ amañ, ma hellin gouzoud petra a lavaro adarre an Aotrou din.

20. Doue a zeuas eta dioh an noz da gavoud Balaam, hag a lavaras dezañ : Mar deo deuet an dud-se evid da gerhoud, sav, ha kee ganto : laka evez koulskoude da ober ar pez a hourhemennin dit.

21. Balaam a zavas dioh ar mintin, ha goude beza dibret e azenez, ez eas en hent gand ar gannaded.

22. Ha Doue a zavas droug ennañ. Hag eun êl d'an Aotrou en em lakaas en e zav en hent rag-eneb da Valaam a oa pignet war e azenez, hag en-doa daou vevel gantañ.

23. An azenez o weloud an êl en e zav en hent, hag e gleze en noaz en e zorn, a zistroas diwar an hent, hag a yeas a-dreuz ar mêziou. Ha pa skoe Balaam ganti o felloud dezañ he degas war an hent,

24. An êl en em lakaas en e zav en eul leh striz etre diou voger a oa war-dro d'ar gwiniennou.

25. Pa her gwelas an azenez, en em stardas ouz ar voger, hag e waskas war droad an hini a oa he hein. Hag eñ a skoas ganti eun eil gwech.

26. Hogen an êl o tremen en eul leh strisoh, e pehini ne helled distrei nag a-zehou nag a-gleiz, en em lakaas en e zav dirag an azenez.

27. Pa welas an azenez an êl en e zav dirazi, e hourvezas dindan treid Balaam : hag hemañ o vond droug ennañ muih-mui, a skoe c'hoaz kreñvoh gand e vaz war he hosteziou.

28. Hogen an Aotrou a zigoras genou an azenez, hag hi a lavaras : Petra em-eus-me greet dit ? Perag eh-eus-te skoet ganen beteg teir gwech ?

29. Ha Balaam a lavaras dezi : O veza ma eh-eus e zellezet, ha ma eh-eus greet goap ahanon. Perag n'am-eus-me ket eur hleze evid da laza ?

30. Hag an azenez a lavaras dezañ : Ha n'on-me ket da loen, war pehini out bet boazet da bignad bepred beteg-henn ? Lavar ma em-eus biskoaz greet netra evel-henn ? Biskoaz, emezañ.

31. Raktal an Aotrou a zigoras daoulagad Balaam, hag eñ a welas an êl a oa en e zav en hent, hag eur hleze noaz en e zorn : hag o veza en em strinket d'an douar, eh azeulas anezañ.

32. Hag an êl a lavaras dezañ : Perag eh-eus-te skoet teir gwech gand da azenez ? Me a zo deuet evid enebi ouzit, rag da hent a zo fall, hag eneb din ;

33. Ha ma ne vije ket bet distroet an azenez diwar an hent, evid lezel an hent ganen pa eneben outi, em-bije da lazet, hag hi a vije chomet beo.

34. Ha Balaam a lavaras d'an êl : Pehet em-eus, o veza na ouien ket penaoz e oas savet a-eneb din : hogen bremañ mar kavez droug ez ajen dit, e tistroin war va hiz.

35. Hag an êl a lavaras dezañ : Kee ganto, ha diwall na liviri netra all nemed ar pez a hourhemennin dit. Mond a reas eta gand ar briñsed.

36. Pa glevas Balak penaoz e teue Balaam, ez eas war e arbenn beteg eur gêr euz ar Voabited, a zo war harzou bro Arnon.

37. Hag eñ a lavaras da Valaam : Kannaded em-eus kaset evid da gerhoud, perag n'out ket deuet raktal d'am havoud ? Ha ne hellan-me ket rei gopr dit o veza ma'z out deuet ?

38. Ha Balaam a lavaras dezañ : Setu, me a zo deuet : hogen ha me hello lavaroud netra ken nemed ar pez a lakay Doue em genou ?

39. Mond a rejont eta kevred, hag e teujont en eur gêr, a oa war harzou rouantelez Balak.

40. Ha pa en-doe Balak lakaet da laza ejenned ha deñved, e kasas roue da Valaam ha d'ar briñsed a oa gantañ.

41. Pa oe deuet ar mintin, Balak a gasas Balaam war lehiou uhel Baal, hag a ziskouezas dezañ ahano penn arme ar bobl a Izrael.

XXIII. Pennad.

Balaam a vennig pobl Izrael.

1. Neuze Balaam a lavaras da Valak : Sav amañ din seiz aoter : hag aoz seiz leue ha kemend-all a dourhed.

2. Ha pa en-doe greet Balak hervez lavar Balaam, e lakajont kevred eul leue hag eun tourh war peb aoter.

3. Ha Balaam a lavaras da Valak : Chom eun nebeud e-kichenn da zakrifis-losk, ken na welin ma en em ziskouezo an Aotrou din, evid ma livrin dit kement en-devezo gourhemennet din.

4. Hag o veza eet kuit buan, e teuas Doue d'e gavoud. Ha Balaam a lavaras dezañ : Seiz aoter em-eus savet, hag em-eus lakaet eul leue hag eun tourh war pep hini anezo.

5. Hogen an Aotrou a lakaas ar ger e genou Balaam, hag a lavaras dezañ : Distro etrezeg Balak, ha komz outañ evel-henn.

6. O veza distroet, e kavas Balak en e zav e-kichenn ar sakrifis-losk, gand oll briñsed ar Voabited.

7. Neuze en em lakaas da ziougani, hag e lavaras : Balak, roue ar Voabited, en-deus va lakaet da zond euz a Aram, euz a veneziou ar sav-heol : Deus, emezañ, ha millig Jakob ; hast fao, hag argas Izrael.

8. Penaoz e villigin-me an hini n'en-deus ket milliget Doue ? Gand pe abeg eh argarzin-me an hini pehini n'eo ket argarzet gand an Aotrou ?

9. Euz a lein ar reier her gwelin, hag euz ar hrehiou e sellin outañ. Ar bobl-se a chomo heh-unan, ha ne vezo ket lakaet e niver ar broadou.

10. Piou a hello niveri poultr Jakob, hag anaoud an niver euz a ouenn Izrael ? Ra varvin euz a varo ar re wirion, ha ra vezo va maro heñvel ouz o hini.

11. Ha Balak a lavaras da Valaam : Petra a rez-te ? Da halvet em-eus evid milliga va enebourien, ha te en eneb a vennig anezo.

12. Ha Balaam a lavaras : Ha me a hell lavaroud netra all nemed ar pez en-devezo gourhemennet an Aotrou din ?

13. Neuze Balak a lavaras dezañ : Deus ganen en eul leh all, a beleh e weli lod euz a Izrael, heb ma helli e weled oll ; hag ahano e villigi anezañ.

14. Ha goude m'en-doe e gaset da eul leh uhel-braz, war lein menez Fasga, e savas Balaam seiz aoter, e lakaas eul leue hag eun tourh war pep hini.

15. Hag e lavaras da Valak : chom amañ e-kichenn da zakrifis-losk, ken na vezin eet war arbenn d'an Aotrou.

16. An Aotrou o veza deuet d'e gavoud, hag o veza lakaet ar ger en e henou, a lavaras dezañ : Distro etrezeg Balak, ha komz outañ evel-henn.

17. O veza distroet, e kavas Balak en e zav e-kichenn e zakrifis-losk, ha priñsed ar Vohabited gantañ. Ha Balak a lavaras dezañ : Petra en-deus lavaret an Aotrou ?

18. Neuze Balaam oh en em lakaad da ziougani, a lavaras : Sao, Balak, ha selaou : klev, mab Sefor.

19. Doue n'eo ket evel an den a hell lavaroud gevier, nag evel mab an den a hell beza hedro. Pa en-deus eta lavaret eun dra, ha n'her gray ket ? Pa en-deus komzet, ha ne zeveno ket e her ?

20. Kaset on bet evid benniga ; ne hellan ket miroud na vennigjen.

21. N'eus ket a idol e Jakob, ha ne weler ket a skeudenn a Izrael. An Aotrou e Zoue a zo gantañ hag e klever en o zouez son gounid o roue.

22. Doue en-deus e zegaset er-mêz euz an Ejipt, hag e nerz a zo heñvel ouz hini ar rinoseros.

23. N'eus ket a rouez a-eneb Jakob, nag a ziougan a-eneb Izrael. Lavaret e vezo en e amzer da Jakob ha da Izrael petra en-devezo greet Doue.

24. Setu ar bobl-se a zavo evel eul leonez ; sevel a ray evel eul leon : ne hourvezo ket, ken n'he-devezo lonket he freiz, hag evet gwad ar re he-devezo lazet.

25. Ha Balak a lavaras da Valaam : Na villig, na na vennig anezi.

26. Ha Balaam a lavaras dezañ : Ha n'em-eus ket lavaret dit penaoz e rajen ar pez a hourhemennje Doue din ?

27. Ha Balak a lavaras dezañ : Deus, ha me az kaso da eul leh all, evid gweloud mar plijo gand Doue e villigi anezo ahano.

28. Ha goude beza e gaset war lein menez Fogor, a zell ouz an distro,

29. Balaam a a lavaras dezañ : Sao amañ d'ar seiz aoter, hag aoz seiz leue, ha kemend-all a dourhed.

30. Balak a reas evel m'en-doa lavaret Balaam dezañ, hag e lakaas eul leue hag eun tourh war beb aoter.

XXIV. Pennad.

Balaam a ziougan diwar-benn Izrael, ha diwar-benn ar Hrist.

1. Pa welas Balaam penaoz e felle d'an Aotrou e vennigje Izrael, n'ez eas mui evel kent evid ober e ziougan : hogen o trei ouz an distro,

2. Hag o sevel e zaoulagad, e welas Izrael en e delto, reizet diogh e vreuriezhou. Ha spered Doue o veza kroget ennañ,

3. En em lakaas da ziougani ha da lavaroud : Setu petra a lavar Balaam, mab Beor ; setu petra a lavar an den a zo serret e lagad :

4. Setu petra a lavar an hini a glev geriou Doue, an hini en-deus gwelet gweledigez an Ollhalloudeg, an hini a gouez, hag a zeu evel-se e zaoulagad da zigeri :

5. Peger kaer eo da dinellou, o ! Jakob, ha da delto, o ! Izrael !

6. Evel traoniennou koadeg int, hag evel liorzou douret a-hed ar steriou, hag evel teltou en-deus startaet an Aotrou, hag evel gwez-sedr tost d'an doureier.

7. Skuilla a ray an dour dreist e zaill, hag e ouenn a vezo evel doureier braz. E roue a vezo distaolet en abeg da Agar, hag e rouantelez a vezo tennet digantañ.

8. Doue en-deus e zegaset er-mêz euz an Ejipt, hag e nerz a zo heñvel ouz hini ar rinoseros. Lonka a raint ar poblou a vezo enebourien dezo ; brevi a raint o eskern, hag e toullint treuz-didreuz anezo gand o zêzou.

9. Pa hourvez, e kousk evel eul leon, hag evel eul leonez ha ne grede den da zihuna. Neb az pennigo, a vezo benniget e-unan, ha neb az milligo, a vezo milliget.

10. Balak o veza savet droug ennañ ouz Balaam, a stlakas e zaouarn, hag a lavaras : Evid millizien va enebourien em-eus da halvet, ha setu en eneb eh-eus o benniget teir gwech.

11. Distro d'az kêr. Lakaet em-boa em fenn digoll ahanout ; hogen an Aotrou en-deus miret ouzit n'az-pe ar govr em-boa dileuret dit.

12. Ha Balaam a lavaras da Valak : Ha n'em-eus ket lavaret d'ar gannaded eh-eus kaset din :

13. Ha pa rofe Balak din leiz e di a arhant hag a aour, ne hellfen ket mond dreist ger an Aotrou va Doue, evid ma lavarjen netra euz va fenn, nag e mad nag e droug ; hogen e lavarjen kement en-dije lavaret an Aotrou din ?

14. Koulskoude o tistrei etrezeg va fobl, e roin dit eun ali, evid ma ouezi petra a hello da ober da bobl oh ar bobl-se en deiziu diweza.

15. Hag oh en em lakaad adarre da ziougani, e lavaras : Setu petra a lavar Balaam, mab Beor ; setu petra a lavar an den a zo serret e lagad :

16. Setu petra a lavar an hini a glev geriou Doue, an hini a anavez kelennadurez ar Meurbed Uhel, an hini a wel gweledigeziou an Ollhalloudeg, an hini a gouez hag en-deus e zaoulagad digor.

17. E weloud a rin, hogen n'eo ket bremañ : selloud a rin outañ, hogen n'eo ket adost. EUR STERENN A ZEUY EUZ A JAKOB, hag eur walenn a zavo euz a Izrael ; hag a skoio gand pennou Moab, hag e wasto oll vugale Set.

18. Hag an Idumen a vezo en e gerz : digouez Seir a yelo d'e enebourien : hogen Izrael a ray pep tra gand kalz a galon.

19. Euz a Jakob e teuy unan hag a aotrounio hag a wasto an dilerh euz ar gêr.

20. Ha pa welas Amalek, oh en em lakaad da ziougani, e lavaras : Amalek, ar henta euz ar poblou, a yelo da goll en diwez.

21. Gweloud a reas ivez ar Sineed ; hag oh en em lakaad da ziougani, e lavaras : Kreñv eo al leh e pehini e chomez : hogen petra bennag ma eh-eus lakaet da neiz war ar mên,

22. Ha ma out dilennet euz a ouenn Sin : pegeid e helli chom ? Rag Asur az kemero.

23. Hag oh en em lakaad adarre da ziougani, e lavaras : allaz ! Piou a vezo beo, pa ray Doue kement-se ?

24. Dond a raint e listri euz an Itali ; trehi a raint an Asiried ; gwasta a raint an Hebreed ; hag en diwez e vezint kollet o-unan.

25. Ha Balaam a zavas, haga zistroas d'ar gêr. Balak a zistroas ivez dre an hent dre behini e oa deuet.

XXV. Pennad.

Gadalez hag idolatri bugale Izrael. Kastiz ar bobl.

1. Hogen en amzer-ze Izrael a chome e Settim, hag ar bobl a gouezas e gadelez gand merhed Moab,

2. Pere o galvas d'o sakrifisou. Hag i a zebras lod anezo¹⁷⁵, hag a azeulas o doueed.

3. Hag Izrael en em ouestlas da Veel-Fegor : hag an Aotrou o vond droug ennañ,

4. A lavaras da Voizez : Kemer oll briñsed ar bobl, ha laka i oh krougou e-kreiz an deiz, evid na gouezo ket va froudenn war Izrael.

5. Ha Moizez a lavaras da varnerien Izrael : Ra lazo pep hini e dud a zo en em ouestlet da Veel-Fegor.

¹⁷⁵ Hag i a zebras lod anezo : Red eo kompren evel-henn : lod anezo a zebras ganto.

6. Ha setu unan euz a vibien Izrael a yeas da gavoud eur Vaniaditez, hag hi eur hast, dirag e vreudeur, e gwel Moizez hag oll vugale Izrael, pere edo o ouela e-tal dor an tabernakl.

7. Pa welas kement-se Fineez, mab Eleazar, mab Aaron ar beleg-braz, e savas euz a-greiz ar bobl, hag o veza kemeret eur goustill,

8. Ez eas war-lerh an Izraelid-se el leh gadal, hag o zreuzas o-daou war eun dro, da lavaroud eo, ar gwaz hag ar vaouez, er pezh a zo red evid genel. Ha gouli bugale Izrael a ehanas.

9. Ha neuze e oe lazeta pevar mil den warn-ugent¹⁷⁶.

10. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez :

11. Fineez, mab Eleazar, mab Aaron ar beleg-braz, en-deus distroet va buanegez diwar bugale Izrael ; o veza ma eo ket kenetraouet gand va oaz en o eneb, evid na gasin ket da get va-unan bugale em oaz.

12. Rag-se, lavar dezañ penaoz e roan dezañ peoh va hevredigez,

13. Hag e vezo, ken dezañ ha d'e ouenn, eur velegiez da viken, o veza ma eo bet oazuz e-keñver e Zoue, ha ma en-deus gwalhet pehed bugale Izrael.

14. Hogen an Izraelit a oe lazeta, hag ar Vaniaditez gantañ, a oa anvet Zambri¹⁷⁷, mab Salu, hag a oa e penn da unan euz a diegeziou breuriez Simeon.

15. Hag ar Vaniaditez a zo bet lazeta gantañ, a oa anvet Kozbi, merh Sur, unan euz ar vrasa briñsed euz ar Vaniadited.

16. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

17. Ra ouezo ar Vaniadited penaoz oh enebourien dezo, ha skoit ganto :

18. O veza ma int en em droet ouzoh evel enebourien ha ma o-deus ho touellet gand idol Fogor, ha gand Kozbi o hoar, merh priñs Madian, pehini a zo bet lazeta e deiz ar gouli en abeg da fallagriez Fogor.

XXVI. Pennad.

Nivererez bugale Izrael, pere a dle mond d'an douar gouestlet.

1. Goude ma oe bet skuillet gwad ar wallerien, an Aotrou a lavaras da Voizez ha da Eleazar ar beleg-braz, mab Aaron :

2. Niverit an oll strollad euz a vugale Izrael, adaleg ugent vloaz hag ohpenn, diou o ziez hag o herentiezou, ar re oll a hell mond d'ar brezel.

3. Rag-se Moizez hag Eleazar ar beleg-braz, pa oant e kompezenn Moab, a-hed ar Jourdan, rag-eneb da Jeriko, a gomzas ouz ar re o-doa

4. Ugent vloaz hag ohpenn, hervez m'en-doa gourhemennet an Aotrou ; ha setu an niver anezo :

5. Ruben, kenta-ganet Izrael : Mibien Ruben, Henoc'h, a behini tiad an Henoc'hited : ha Fallu, a behini tiad ar Fallauited.

6. Hag Hesron, a behini tiad an Hesronited : ha Charmi, a behini tiad ar Charmited.

7. Ar re-ze eo an tiadou euz a ouenn Ruben ; hag an niver anezo en em gavas euz a dri mil ha daou-ugent mil ha seiz kant ha tregont¹⁷⁸.

8. Fallu en-oe da vab Eliab :

¹⁷⁶ pevar mil den warn-ugent : 24.000.

¹⁷⁷ Zambri : ano an Izarelid.

¹⁷⁸ a dri mil ha daou-ugent mil ha seiz kant ha tregont : 43.730.

9. Mibien Eliab a oe Namuel, ha Datan, hag Abiron. Ar re-mañ, da lavaroud eo Datan hag Abiron, a oe ar briñsed-se euz ar bobl, pere a zavas a-eneb Moizez hag Aaron e dispah Kore, pa en em zispahjont a-eneb an Aotrou :

10. Hag an douar a zigoras dre an hanter evid lonka Kore, kalz re all o veza maro gantañ, pa zevas an tan deg den ha daouzeg-ugent. Ha c'hoarvezoud a reas eur burzud braz ;

11. Rag, petra bennag ma varvas Kore, ne varvas ket e vibien gantañ.

12. Mibien Simeon hervez o herentiezou : Namuel, a behini tiad an Namuelited ; ha Jamin, a behini tiad ar Jaminited ; ha Jac'hin, a behini tiad ar Jac'hinited :

13. Ha Zare, a behini tiad ar Zareited ; ha Saul, a behini tiad ar Saulited.

14. Ar re-ze eo an tiadou euz a ouenn Simeon ; hag an niver anezo a oa euz a zaou vil warn-ugent ha daou-hant¹⁷⁹.

15. Mibien Gad hervez o herentiezou : Sefon, a behini tiad ar Sefonited ; hag Aggi, a behini tiad an Aagited ; ha Suni, a behini tiad ar Sunited :

16. Hag Ozni, a behini tiad an Oznited ; hag Her, a behini tiad an Herited :

17. Hag Arod, a behini tiad an Arodited ; hag Ariel, a behini tiad an Arielited.

18. Ar re-ze eo an tiadou euz a Had ; hag an niver anezo a oa euz a zaou-ugent mil ha pemp-kant¹⁸⁰.

19. Mibien Juda a oa Her, hag Onan, pere a varvas o-daou e douar Kanaan.

20. Ha mibien Juda hevez o herentiezou : Sela, a behini tiad ar Selaited ; ha Farez, a behini tiad ar Farezited ; ha Zare, a behini tiad ar Zareited.

21. Hogen mibien Farez a oe Hesron, a behini tiad an Hesronited ; ha Hamul, a behini tiad Hamulited.

22. Ar re-ze a oa an tiadou euz a Juda ; hag an niver anezo a oa euz a hweh mil deg ha tri-ugent mil ha pemp kant¹⁸¹.

23. Mibien Isakar hervez o herentiezou : Tola, a behini tiad an Dolaited ; ha Fua, a behini tiad ar Fuaited.

24. Ha Jasub, a behini tiad ar Jasubited ; ha Semtan, a behini tiad ar Semranited.

25. Ar re-ze eo ar herentiezou euz a Isakar ; hag an niver anezo a oa euz a bevar mil ha tri-ugent ha tri-hant¹⁸².

26. Mibien Zabulonhevez o herentiezou : Sared, a behini tiad ar Seraited ; hag Elon, a behini tiad an Elonited ; ha Jalel, a behini tiad ar Jalelited.

27. Ar re-ze eo ar herentiezou euz a Zabulon ; hqag an niver anezo a oa euz a dri-ugent mil ha pemp-kant¹⁸³.

28. Mibien Jozef hervez o herentiezou : Manase hag Efraim.

29. A Vanase eo ganet Mac'hir, a behini tiad ar Varc'hirited ; ha Mac'hir a oa tad Galaad, a behini tiad ar Halaadited.

30. Galaad en-doa da vibien, Jezer, a behini tiad ar Jezerited ; hag Helek, a behini tiad an Helekited.

31. Hag Asriel, a behini tiad an Asrielited ; ha Sechem, a behini tiad ar Sechemited ;

32. Ha Semida, a behini tiad ar Semidaited ; hag Hefer, a behini tiad an Heferited.

33. Hogen Hefer a oe tad da Zalfaad, pehini n'en-doa ket a vibien, hogen merhed hepken, a bere ema amañ o anoiou : Maal, ha Noa, hag Hegla, ha Melcha, ha Tersa.

¹⁷⁹ a zaou vil warn-ugent ha daou-hant : 22.200.

¹⁸⁰ a behini tiad : 40.500.

¹⁸¹ a hweh mil deg ha tri-ugent mil ha pemp kant : 76.500.

¹⁸² a bevar mil ha tri-ugent ha tri-hant : 64.300.

¹⁸³ euz a dri-ugent mil ha pemp-kant : 60.500.

34. Ar re-ze eo an tiadou euz a Vanase, hag an niver anezo a oa euz a zaou vil hag hanter-kant mil ha seiz-kant¹⁸⁴.

35. Hogen mibien Efraim hervez o herentiezou, a oe ar re-mañ : Sutala, a behini tiad ar Zutalaited ; ha Becher, a behini tiad ar Vecherited, ha Tehen, a behini tiad an Dehenited.

36. Hogen mab Sutala a oe Heran, a behini tiad an Heranited.

37. Ar re-ze eo ar herenteziou euz a Efraim : hag an niver anezo a oa euz a zaou vil ha tregont mil ha pemp kant¹⁸⁵.

38. Setu mibien Jozef hervez o ziadou. Mibien Benjamin hervez o herentiezou : Bela, a behini tiad ar Velaited ; hag Asbel, a behini tiad an Asbelited ; hag Ahiram, a behini tiad an Ahiramited ;

39. Ha Sufam, a behini tiad ar Zufamited ; hag Hufam, a behini tiad an Hufamited ;

40. Mibien Bela a oe Hered ha Noeman. Euz a Hered, tiad an Heredited ; euz a Noeman, tiad an Noemanited.

41. Setu mibien Benjamin hervez o herenteziou ; hag an niver anezo a oa euz a bemp mil ha daou-ugent mil ha c’hweh-kant¹⁸⁶.

42. Mibien Dan hervez o herentiezou : Suham, a behini tiad ar Zuhamited. Ar re-ze eo mibien hervez o ziadou.

43. Suhamited e oent oll ; hag an niver anezo a oa euz a bevar mil ha tri-ugent mil ha pevar-hant¹⁸⁷.

44. Mibien Aser hervez o herentiezou, Jemna, a behini tiad ar Jemnaited ; ha Jessui, a behini tiad ar Jessuited ; ha Brie, a behini tiad ar Vrieited.

45. Mibien Brie a oe Heber, a behini tiad an Heberited ; ha Melkiel, a behini tiad ar Velkielited.

46. Hogen ano merh Aser a oe Sara.

47. Ar re-ze eo eo ar herentiezou euz a vibien Aser : hag an niver anezo a oa euz a dri mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant¹⁸⁸.

48. Mibien Neftali, hervez o herentiezou : Jesiel, a behini tiad ar Jesielited ; ha Guni, a behini tiad ar Hunited.

49. Ha Jeser, a behini tiad ar Jeserited ; ha Sellem, a behini tiad ar Zellemited.

50. Ar re-ze eo kerentiezou mibien Neftali, hervez o ziadou ; hag an niver anezo a oa euz a bemp mil ha daou-ugent mil ha pevar-hant¹⁸⁹.

51. Setu an niver euz a strollad mibien Izrael, en em gavas euz a hweh-kant mil hag eur mil ha seiz-kant ha tregont¹⁹⁰.

52. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez, o lavaroud :

53. An douar a vezo rannet etre ar re-mañ, evid ma vezo en o herz hervez an niver euz o anoioù.

54. D’ar re a vezo e niver braz, e roi eul lodenn vrasoh, ha d’ar re a vezo e niver bihan, e roi eul lodenn vihannoh ; hag ar gerz a vezo roet da bep hini, hervez ma eo bet niveret bremañ :

55. En heveleb doare koulskoude ma vezo rannet an douar dre ar sort etre ar breuriezou hag an tiadou.

56. Kement a vezo degouezet dre ar sort, a zeuy e kerz an niver braz pe an niver bihan.

¹⁸⁴ a zaou vil hag hanter-kant mil ha seiz-kant : 52.700.

¹⁸⁵ a zaou vil ha tregont mil ha pemp kant : 32.500.

¹⁸⁶ a bemp mil ha daou-ugent mil ha c’hweh-kant : 45.600.

¹⁸⁷ a bevar mil ha tri-ugent mil ha pevar-hant : 64.400.

¹⁸⁸ a dri mil hag hanter-kant mil ha pevar-hant : 53.400.

¹⁸⁹ a bemp mil ha daou-ugent mil ha pevar-hant : 45.400.

¹⁹⁰ a hweh-kant mil hag eur mil ha seiz-kant ha tregont : 601.730

57. Setu ivez niver mibien Levi hervez o ziadou ; Gerson, a behini tiad ar Hersonited ; ha Kaat, a behini tiad ar Gaatided ; ha Merari, a behini tiad ar Verarited.

58. Ar re-mañ eo tiadou Levi : tiad Lobni, tiad Hebroni, tiad Moholi, tiad Musi, tiad Kore. Hogen Kaat a oe tiad Amram.

59. Pehini en-doe da wreg Joc'haved, merh Levi, pehini a oe ganet dezañ en Ejipt. Houmañ a hanas euz a Amram, heh ozah, daou vab, Aaron ha Moizez, ha Mari o hoar.

60. Euz a Aaron e oe ganet Nadab hag Abiu, Eleazar hag Hamar :

61. A bere Nadab hag Abiu a varvas, evid beza kinniget tan a-ziavêz d'an Aotrou.

62. Hag ar re oll euz a diad Levi, pere a oe niveret, a oa euz a dri mil paotr warn-ugent¹⁹¹, adaleg eur miz hag ohpenn : rag ne oent ket niveret e-touez bugale Izrael, ha en oe ket roet a zegouez dezo e-mesk ar re all.

63. Setu an niver euz a vugale Izrael, savet gand Moizez hag Eleazar ar beleg-braz e mêziou Moab, a-hed ar Jourdan, ha rag eneb da Jeriko.

64. E-touez pere n'en em gavas hini euz ar re a oa bet niveret kent gand Moizez hag Aaron e distro Sinai.

65. Rag diouganet en-doa an Aotrou penaoz e varvjent oll en distro. Ne chomas eta hini anezo, nemed Kaleb, mab Jefone, ha Jozue, mab Nun.

XXVII. Pennad.

Lezenn e-keñver an degoueziou. Jozue lakaet gand an Aotrou e-leh Moizez.

1. Hogen merhed Salfaad, mab Hefer, mab Galaad, mab Mac'hir, mab Manase, a oe mab da Jozef, hag a bere setu amañ an anoiou, Maal, Noa, Hegia, Melka ha Tersa,

2. A yeas da gavoud Moizez hag Eleazar ar beleg-braz, hag oll briñsed ar bobl, e-tal dor tabernakl ar gevredigez, hag a lavaras :

3. On tad a zo maro en distro : n'eo ket en em gavet en dispah a zo bet savet gand Kore a-eneb an Aotrou ; hogen en e behed eo marvet, ha n'en-deus ket bet a baotred. Perag e vezo eñ tennet e ano euz e diad, en abeg n'en-deus ket bet eur mab ? Roit deom eun degouez e-touez kerent on tad.

4. Ha Moizez a zougas o goulenn da varn an Aotrou.

5. Hag an Aotrou a lavaras dezañ :

6. Eun dra reiz a houlen merhed Salfaad. Ro dezo kerz e-touez kerent o zad, ha ra zeuint da herezed dezañ.

7. Ha setu petra a liviri da vugale Izrael :

8. Pa vezo maro eun den divab, e tremeno madou an tad d'e verh.

9. Mar deo ivez diverh, en-devezo e vreudeur da hered.

10. Ha ma n'en-deus ket a vreudeur, e root e zegouez da vreudeur e dad.

11. Ha ma n'en-deus ket a eontred a-berz tad, e vezo roet e zegouez d'e gerent nesa. Al lezenn-ze a vezo miret didorr ha da viken gand bugale Izrael, evel m'en deus an Aotrou e hourhemennet da Voizez.

12. An Aotrou a lavaras ivez da Voizez : Pign war menez Abarim-ze, ha sell ahano oh an douar a dlean da rei da vugale Izrael.

13. Ha goude m'az-pezo e welet, ez i ivez etrezeg da bobl, evel ma oa eet da vreur Aaron.

14. O veza ma hoh-eus gwallhreet em heñver e distro Sin e-pad enebiez ar bobl, ha n'eo ket fellet deoh va meuli dirazañ en abeg d'an doureier, doureier an enebiez e Kadez, e distro Sin.

¹⁹¹ a dri mil paotr warn-ugent : 23.000.

15. Ha Moizez a lavaras d'an Aotrou :
16. Ra lakay an Aotrou, Doue sperejou pep kig, eun den a vezo e penn d'an oll bobl-mañ,
17. A hello mond ha dond en o raog, hag o has hag o degas ; evid na vezo ket pobl an Aotrou evel deñved heb mesaer.
18. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Kemer Jozue, mab Nun, an den-ze e pehini ema ar spered, ha laka da zorn warnezañ.
19. Hemañ en em zalho dirag Eleazar ar beleg-braz, ha dirag an oll bobl ;
20. Hag a roy dezañ kelennou dirag an oll ; ha lodenn euz da veli, evid ma vezo selaouet gand oll strollad bugale Izrael.
21. Rga se, pa vezo eun dra da ober, Eleazar ar beleg-braz a houlenno ali digand an Aotrou. Dih ger Eleazar, Jozue a yelo hag a zeuy, hag oll vugale Izrael gantañ, hag an oll strollad.
22. Moizez a reas evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ. Hag o veza kemeret Jozue, e kasas anezañ dirag Eleazar ar beleg-braz, ha dirag oll strollad ar bobl.
23. Ha goude beza lakaet e zaouarn war e benn, e tisplegas dezañ kement en-doa gourhemennet an Aotrou.

XXVIII. Pennad.

Sakrifisou bemdez, evid deiz ar sabat, evid ar henta deiz euz a beb miz, evid Pask hag evid ar Pantekost.

1. An Aotrou a lavaras ivez da Voizez :
2. Gourhemenn da vugale Izrael, ha lavar dezo : Kinniget din en hoh amzer va hinnig, hag ar baraou, hag an ostivou-losk euz a eur c'hwez ker c'hwek.
3. Setu amañ ar sakrifisou a dleit da ginniga : Daou oan bloaz dinamm, bemdez, evel eur sakrifis-losk peurbaduz :
4. Unan a ginnigot dioh ar mintin, hag egile dioh ar pardaez.
5. Hag an degved lodenn euz a eun efi a flour-gwiniz a vezo glebiet gand eoul ar glanna, euz ar bevare lodenn euz a eun hin.
6. Ar sakrifis-losk peurbaduz eo, hoh-eus kinniget war menez Sinai, evel sakrifis euz a eur c'hwez hetuz-braz d'an Aotrou.
7. Hag e kinnigot evid braoued-kinnig ar bevare lodenn euz a eun hin a win, dre beb oan, e santadur an Aotrou.
8. Kinnig a reot en heveleb doare an oan all war ar pardaez, gand oll lidou sakrifis ar mintin, hag e vraoued-kinnigou, evel eur hinnig euz a eur c'hwez hetuz-braz d'an Aotrou.
9. Hogen e deiz ar sabat e kinnigot daou oan-bloaz dinamm, ha daou zegved flour-gwiniz glebiet gand eoul, evid ar sakrifis, hag ar braoued-kinnigou,
10. A vez skuillet dioh al lid dre bep sabat, evel ar sakrifis-losk peurbaduz.
11. Hogen ar henta deiz euz ar miz e kinnigot d'an Aotrou evid sakrifis-losk, daou leue euz an tropell, eun tourh, seiz oan dinamm,
12. Ha tri degved flour-gwiniz glebiet gand eoul, evid sakrifis peb leue ; ha daou zegved flour-gwiniz glebiet gand eoul, evid bep tourh.
13. Kinnig a reot ivez an degved lodenn euz ar flour-gwiniz glebiet gand eoul, evid pep oan. Eur sakrifis-losk eo a hwez-vad d'an Aotrou.
14. Hogen setu kinnigou gwin a dleer da skuilla evid pep viktim ; an hanter euz a eun hin evid peb leue ; an drede lodenn evid eun tourh, hag ar bevare lodenn evid eun oan. Henez a vezo ar sakrifis-losk euz a beb miz, a zeu er bloaz an eil goude egile.

15. Kinniget e vezo ivez d'an Aotrou eur bouh evid ar pehed, ohpenn ar sakrifis-losk peurbaduz gand e vraoued-kinnigou.

16. Hogen er miz kenta, d'ar pevarzegved deiz euz ar miz, e vezo Pask an Aotrou :

17. Ha d'ar pemzegved deiz e vezo ar gouel lid : e-pad seiz devez e vezo debret bara dihoell.

18. An deiz kenta anezo a vezo enoruz ha santel : ne reot labour gouniduz ebed ennañ.

19. Kinnig a reot d'an Aotrou e sakrifis-losk, daou leue euz an tropell, eun tourh,, ha seiz oan-bloaz dinamm ;

20. Hag ar hinnigou a flour-gwiniz evid pep hini, a vezo euz a vleud glebiet gand eoul, tri degved dre beb leue, ha daou zegved evid eun tourh ;

21. Hag an degved lodenn euz an degved evid pep oan, da lavaroud eo, evid pep hini euz ar seiz oan :

22. Hag eur bouh evid ar pehed, evid ma vezo distaolet deoh :

23. Heb niveri sakrifis-losk ar mintin a ginnigot bepred.

24. Evel-se e reot bemdez e-pad ar seiz devez evid kenderhel an tan, hag ar c'hwez hetuz-braz d'an Aotrou, a zavo euz ar sakrifis-losk, hag euz a vraoued kinnig peb viktim.

25. Ar seizved deiz a vezo ivez brudet-braz ha santel evidoh : ne reot labour gouniduz ebed ennañ.

26. Deiz ar previdiou, pa ginnigot ar frouez kenta d'an Aotrou, goude beza sevenet ar sizuniou, a vezo enoruz ha santel ; ne reot labour gouniduz ebed ennañ.

27. Hag e kinnigot d'an Aotrou e sakrifis-losk, evel eun dra a hwez hetuz-braz, daou leue euz an tropell, eun tourh, ha seiz oan-bloaz dinamm ;

28. Hag ar hinnigou a flour-gwiniz evid pep hini, a vezo euz a vleud glebiet gand eoul, tri degved dre beb leue, ha daouzegved evid an tourhed :

29. Hag an degved lodenn euz an degved evid pep oan, da lavaroud eo,, evid pep hini eta euz ar seiz oan : hag ivez ar bouh.

30. A zo lazet evid an diskarg ; heb niveri ar sakrifis-losk peurbaduz, gand e vraoued-kinnigou.

31. Kement loen a ginnigot gand e vraoued-kinnig a vezo dinamm.

XXIX. Pennad.

Sakrifisou evid gouel ar herniel-boud, gouel an diskarg, ha gouel an tellou.

1. Ar henta deiz euz ar seizved miz a vezo ivez enoruz ha santel evidoh : ne reot labour gouniduz ebed ennañ ; rag deiz ar son skiltr, deiz ar herniel-boud eo.

2. Kinnig a reot d'an Aotrou evid sakrifis-losk euz a eur c'hwez hetuz-braz dezañ, eul leue euz an tropell, eun tourh ha seiz oan-bloaz dinamm :

3. Hag evid ar hinnigou all euz ar sakrifis, tri degved flour-gwiniz glebiet gand eoul evid pep leue, daou zegved evid eun tourh,

4. Hag eun degved evid pep hini euz ar seiz oan ;

5. Hag ar bouh evid ar pehed, a zo kinniget evid diskarg ar bobl ;

6. Heb niveri sakrifis-losk an deziou kenta euz ar miz, gand e voued-kinnigou, hag ar sakrifis-losk peurbaduz gand ar braoued-kinnigou dioh ar boaz : o hinniga a reot gand an heveleb lidou evel eur c'hwez hetuz-braz a zever dirag an Aotrou :

7. An degved deiz euz ar seizved miz-se a vezo ivez santel hag enoruz evidoh : gwana a reot hoh eneou en deiz-se, ha ne reot labour gouniduz ebed ennañ.

8. Kinnig a reot d'an Aotrou evid sakrifis-losk euz a eur c'hwez hetuz-braz dezañ, eul leue euz an tropell, eun tourh, ha seiz oan-bloaz dinamm :

9. Hag evid ar hinnigou all euz ar sakrifis, tri degved flour-gwiniz glebiet gand eoul evid peb leue, daou zegved evid an tourh,

10. Hag an degved lodenn euz a eun degved evid pep hini euz ar sezi oan ;

11. Hag ar bouh evid ar pehed, heb niveri an traou e vezer boazet da ginniga evid diskarg ar pehed, hag ar sakrifis-losk peurbaduz, hag e voued-kinnigou hag e vraoued-kinnigou.

12. Hogen d'ar pemzegved deiz euz ar seizved miz, pehini a vezo santel hag enoruz evidoh, ne reot labour gouniduz ebed ; hogen eur gouel lid a reot d'an Aotrou e-pad seiz devez.

13. Kinniga a reot d'an Aotrou evid sakrifis-losk euz a eur c'hwez hetuz-braz dezañ, trizeg leue euz an tropell, daou dourh, ha pevarzeg oan-bloaz dinamm :

14. Hag evid ar hinnigou all euz ar sakrifis, tri degved flour-gwiniz glebiet gand eoul evid pep hini euz an trizeg leue ; ha daou zegved evid pep hini euz an daou dourh ;

15. Hag an degved lodenn euz a eun degved evid pep hini euz ar pevarzeg oan,

16. Hag ar bouh evid ar pehed ; heb niveri ar sakrifis-losk peurbaduz, gand e voued-kinnig hag e vraoued-kinnig.

17. D'an eil deiz e kinnigot daouzeg leue euz an tropell, daou dourh, ha pevarzeg oan-bloaz dinamm.

18. Kinniga a reot ivez, dioh al lid, ar boued kinnigou hag ar braoued kinnigou evid pep hini euz al leueou, euz an tourhed, hag euz an ein.

19. Hag ar bouh evid ar pehed ; heb niveri ar sakrifis-losk peurbaduz, gand e voued-kinnig hag e vraoued-kinnig.

20. D'an trede deiz e kinnigot unneg leue, daou dourh ha pevarzeg oan-bloaz dinamm.

21. Kinniga a reot ivez, dioh al lid, ar boued-kinnigou hag ar braoued-kinnigou evid pep hini euz al leueou, euz an tourhed hag euz an ein.

22. Hag ar bouh evid ar pehed ; heb niveri ar sakrifis-losk peurbaduz, gand e voued-kinnig hag e vraoued-kinnig.

23. D'ar pevare deiz e kinnigot deg leue, daou dourh, ha pevarzeg oan-bloaz dinamm.

24. Kinniga a reot ivez, dioh al lid, ar boued-kinnigou hag ar braoued-kinnigou evid pep hini euz al leueou, euz an tourhed hag euz an ein.

25. Hag ar bouh evid ar pehed ; heb niveri ar sakrifis-losk peurbaduz, gand e voued-kinnig hag e vraoued-kinnig.

26. D'ar pempved deiz e kinnigot nao leue, daou dourh, ha pevarzeg oan-bloaz dinamm.

27. Kinniga a reot ivez, dioh al lid, ar boued-kinnigou hag ar braoued-kinnigou evid pep hini euz al leueou, euz an tourhed hag euz an ein.

28. Hag ar bouh evid ar pehed ; heb niveri ar sakrifis-losk peurbaduz, gand e voued-kinnig hag e vraoued-kinnig.

29. D'ar c'hwehved deiz e kinnigot eiz leue, daou dourh, ha pevarzeg oan-bloaz dinamm.

30. Kinniga a reot ivez, dioh al lid, ar boued-kinnigou hag ar braoued-kinnigou evid pep hini euz al leueou, euz an tourhed hag euz an ein.

31. Hag ar bouh evid ar pehed ; heb niveri ar sakrifis-losk peurbaduz, gand e voued-kinnig hag e vraoued-kinnig.

32. D'ar seizved deiz e kinnigot seiz leue, daou dourh, ha pevarzeg oan-bloaz dinamm.

33. Kinniga a reot ivez, dioh al lid, ar boued-kinnigou hag ar braoued-kinnigou evid pep hini euz al leueou, euz an tourhed hag euz an ein.

34. Hag ar bouh evid ar pehed ; heb niveri ar sakrifis-losk peurbaduz, gand e voued-kinnig hag e vraoued-kinnig.

35. D'an eizved deiz, pehini eo al lidusa, ne reot labour gouniduz ebed,

36. Hag e kinnigot d'an Aotrou evid sakrifis-lost euz a hwez hetuz-braz dezañ, eul leue, eun tourh, ha seiz oan-bloaz dinamm.

37. Kinniga a reot ivez, dioh al lid, ar boued-kinnigou hag ar braoued-kinnigou evid pep hini euz al leueou, euz an tourhed hag euz an ein.

38. Hag ar bouh evid ar pehed ; heb niveri ar sakrifis-losk peurbaduz, gand e voued-kinnig hag e vraoued-kinnig.

39. Setu petra a ginnigot d'an Aotrou en ho koueliou-lid, heb niveri ar gouestlou hag ar roou a-youl a ginnigot e sakrifis-losk, e boued-kinnig, e braoued-kinnig, hag e ostivou a beoh.

XXX. Pennad.

Lezennou diwar-benn ar gouestltou greet gand le.

1. Moizez a zisklêrias da vugale Izrael kement en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ.

2. Hag e lavaras da briñsed breuriezou bugale Izrael : Setu petra en-deus gourhemennet an Aotrou.

3. Ma en-deus eur gwaz greet eur gouestl d'an Aotrou, ha mar deo en em ereet dre le, ne dorro ket e her ; hogen seveni a ray kement eo en em ouestlet da ober.

4. Ma he-deus eur vaouez greet eur gouestl, ha mar deo en em ereet dre le ; mar deo plah-yaouank, ha mar deo¹⁹² c'hoaz e ti he zad : ma anavez an tad ar gouestl he-deus greet, hag al le dre behini he-deus ereet heh ene, ha mar tav-eñ, e vezo-hi dalhet d'he gouestl. :

5. Hag e seveno hag e ray kement he-devezo gouestlet ha touet.

6. Hogen mar deo bet enebet an tad ouz he gouestl, kerkent ha m'en-deus klevet anezañ, he gouestlou hag he leou a vezo didalvez, ha ne vezo ket dalhet-hi d'ar pezh he-devezo gouestlet, dre ma en-deus enebet an tad.

7. Mar he-deus eun ozah, ha ma he-deus gouestlet eun dra, pe ma he-deus eur wech laosket eur ger euz he genou dre behini eo ereet heh ene dre le ;

8. Ma ne eneb ket an ozah, en heveleb deiz ma en-deus e glevet, e vezo hi dalhet d'he gouestl, hag e seveno kement e vezo en em ouestlet da ober ;

9. Hogen pa en-devezo-eñ e glevet, ma eneb outi, ha ma laka da veza didalvez he gouestlou hag ar geriou dre bere he-devezo-hi ereet heh ene, an Aotrou a vezo trugarezuz en he heñver-hi.

10. Ar wreg intañvez, hag ar wreg kaset kuit gand heh ozah, a zeveno kement gouestl o-devezo greet.

11. Ma he-deus eur wreg, hag hi e ti heh ozah, en em ereet gand eur gouestl hag eul le ;

12. Mar klev an ozah, ha ma ne eneb ket ouz ar gouestl, e seveno-hi kement he-devezo gouestlet.

¹⁹² deo : dema.

13. Hogen ma eneb an ozah raktal, ne vezo ket dalhet hi d'he gouestl, dre ma en-deus enebet heh ozah, hag an Aotrou a vezo trugarezuz en he heñver-hi.

14. Ma he-deus greet eur gouestl ha mar deo en em ereet gand eul le evid gwana heh ene dre ar yun pe dre eun diouer bennag all, e youl heh ozah e vezo pe e ray, pe ne ray ket.

15. Mar tav an ozah goude beza klevet, ha ma ne ro da anaoud e vennoz nemed antronoz, e seveno-hi kement gouestl he-devezo greet, dre ma en-deus klevet an ozah, hag eo tavet kerkent.

16. Hogen goude beza gouezet ar gouestl, mar deu da enebi, e tougo eñ he fallagriez.

17. Setu al lezennou en-deus roet an Aotrou da Voizez, etre an ozah hag ar wreg, etre an tad hag ar verh a zo c'hoaz plah-yaouank, pe a chom e ti he zad.

XXXI. Pennad.

Drouzivez ar Vadianited. Rann an diwisk.

1. An Aotrou a gomzas neuze ouz Moizez, o lavaroud :
2. Kastiz da genat ar Vadianited diwar-benn bugale Izrael, ha goude-ze e vezi unvanet gand da bobl.
3. Ha raktal Moizez a lavaras d'ar bobl : Roit armou da lod ahanoh evid an emgann, evid ma hellint tenna veñjañs an Aotrou war ar Vadianited.
4. Dilennit mil den euz a beb breuriez Izrael, evid o has d'ar brezel.
5. Hag i a roas mil den euz a beb breuriez Izrael, da lavaroud eo, daouzeg mil den a vrezel dare d'an emgann.
6. Moizez o hasas gand Fineez, mab Eleazar, ar beleg-braz, da behini e roas c'hoaz al listri santel, hag ar herniel-boued evid seni ganto.
7. Ha pa o-doe stourmet ouz ar Vadianited, ha pa o-doe o zrehet, e lazjont an oll baotred anezo,
8. Hag o roueed Evi, ha Rekem, ha Sur, hag Hur, ha Rebe, pemp priñs euz ar vro-ze : ha Balaam, mab Beor, a lazjont ivez gand ar hleze.
9. Kemeroud a rejont ivez o gwragez, o bugaligou, o oll loened, hag o arrebeuri : preiza a rejont kement o-doa.
10. Entana a rejont o hêriou, o bourhiou hag o hestell.
11. Hag i a zastumas ar preiz, ha kement o-doa kemeret, ken euz an dud, ken euz al loened.
12. Hag o degasjont dirag Moizez, ha dirag Eleazar ar beleg-braz ; ha dirag oll strollad bugale Izrael : hag an traou all a gasjont ganto d'ar hamp, e kompezenn Moab, a-hed ar Jourdan, rag-eneb da Jeriko.
13. Neuze Moizez hag Eleazar ar beleg-braz, hag oll briñsed ar sinagog, a yeas ermêz euz ar hamp war o arbenn.
14. Ha Moizez o vond droug ennañ ouz pennou an arme, ouz ar vlenerien, ouz ar hantenerien¹⁹³ a oa deuet euz ar brezel,
15. A lavaras dezo : Perag hoh-hu bet truez oh ar merhed ?
16. Ha n'eo ket i o-deus touellet bugale Izrael, dioh atiz Balaam, hag o-deus o lakaet da derri lezenn an Aotrou gand pehed Fogor, evid pehini eo bet skoet ar bobl ?
17. Lazit eta an oll baotred, hag ar vugaligou anezo zoken : lazit ivez ar merhed, gand pere a zo bet kousket¹⁹⁴ ar wazed.

¹⁹³ ar hantenerien : kant brezeler a-gevred.

¹⁹⁴ a zo bet kousket : eo bet kousket

18. Hogen mirit evidoh an oll verhedigou, hag ar gwerhez e-touez ar re all ;
19. Ha chomit e-pad seiz devez er-mêz euz ar hamp. Neb en-devezo lazet eun den, pe a vezo stoket ouz eun den lazet, en em hlannaio an trede hag ar seizved deiz.
20. Glannaad a ray ivez an oll breiz, ar gwiskou, al listri, hag an traou all, pe a grohenn, pe a vleo gevr, pe a goad.
21. Eleazar, ar beleg-braz, a gomzas ivez evel-henn ouz tud an arme pere a oa bet er brezel : Setu petra a hourhemenn al lezenn en-deus roet an Aotrou da Voizez :
22. An aour, hag an arhant, hag an arem, hag an houarn, hag ar plomm, hag ar stên,
23. Ha kement a hell tremenoud dre an tan, ra vezo glannaet gand an tan. Hogen kement ha na hello ket beza lakaet en tan, ra vezo santellaet gand an dour a ziskarg.
24. Gwalhi a reot ho tillad er seizved deiz, ha goude beza bet glannaet, e teuot adarre d'ar hamp.
25. An Aotrou a lavaras ivez ad Voizez :
26. Kemer an niver euz a gement a zo bet kemeret, adaleg an dud beteg al loened, te hag Eleazar ar beleg-braz, ha priñsed ar bobl :
27. Ha rann ar preiz e diou lodenn kevatal etre ar re a zo bet o stourmi er brezel, hag ar re all euz ar bobl. ; unan war bemp-kant, ken euz an dud, ken euz an ejenned, hag euz an ezen, hag euz an deñved,
28. Ranna a ri ivez lodenn an Aotrou, euz a hini ar re a zo bet o stourmi er brezel, unan war bemp-kant, ken euz an dud, ken euz an ejenned, hag euz an ezen, hag euz an deñved,
29. A roy da Eleazar ar beleg-braz, o veza ma int previdi an Aotrou.
30. Euz a hanter lodenn bugale Izrael e kemeri unan diwar pep hanter-kant, ken euz an dud, ken euz an ejenned, ken euz an ezen, hag euz an deñved, hag euz al loened all, hag e roi anezo d'al Levited, pere a veill evid miroud tabernakl an Aotrou.
31. Moizez hag Eleazar a reas eta ar pez en-doa gourhemennet an Aotrou.
32. Hogen ar preiz he-doa kemeret an arme, a oe euz a hweh-kant mil pemzeg ha tri-ugent dañvad,
33. Euz a zaouzeg mil ha tri-ugent ejenn,
34. Euz a eur mil ha tri-ugent azen,
35. Hag euz a verhed ha n'o-doa ket anavezet a wazed, daou vil ha tregont mil.
36. An hanter a oe roet d'ar re a oa bet d'ar brezel, da lavaroud eo, tri-hant mil seiz mil ha tregont ha pemp-kant dañvad
37. A bere e oe miret evid lodenn an Aotrou c'hweh-kant pemzeg ha tri-ugent dañvad :
38. C'hweh mil ha tregont ejenn, a bere e oe miret daouzeg ha tri-ugent ;
39. Tregont mil ha pemp kant azen, a bere e oe miret unan ha tri-ugent ;
40. Ha c'hwezeg mil plah-yaouank, a bere e oe miret diou ha tregont evid lodenn an Aotrou.
41. Ha Moizez a roas an niver euz a brevidiou an Aotrou da Eleazar ar beleg-braz, evel ma oa bet gourhemennet dezañ,
42. Euz an hanter a lodenn bugale Izrael, en-doa lakaet a-du evid ar re a oa bet d'ar brezel,
43. Hogen euz an hanter lodenn a zegoueze d'an dilerh euz ar bobl, da lavaroud eo, euz an tri-hant mil ha tregont ha pemp kant dañvad,
44. Euz ar c'hweh mil ha tregont mil ejenn,
45. Euz an tregont ha pemp mil kant azen,
46. Hag euz ar c'hwezeg mil plah-yaouank,
47. Moizez a gemeras unan war pep hanter-kant, hag o roas d'al Levited, evel m'en-doa e hourhemennet an Aotrou.

48. Neuze ar er genta euz an arme, ar villenerien¹⁹⁵ hag ar gantenerien¹⁹⁶ a zeuas da gavoud Moizez, hag a lavaras dezañ :

49. Ni, da zervijerien, on-eus niveret ar vrezilidi a oa dindan or galloud ; ha n'eo kollet hini anezo.

50. Rag se e kinnigom, pep hini ahanom, e ro d'an Aotrou, an oll aour on-eus gellet da gavoud er preiz, lagadennou-garr, lagadennou-breh, gwalinier, kelhennou ha chadennou, evid ma pedi an Aotrou evidom :

51. Moizez hag Eleazar ar beleg-braz a gemeras eta an oll aour e meur a zoare,

52. O-doa degaset ar villinerien hag ar gantenerien, hag a boueze c'hwezeg mil seiz-kant hag hanter-kant sikl.

53. Rag pep hini en-doa bet evitañ kement en-doa preizet.

54. Ha Moizez hag Eleazar o veza kemeret an aour-ze a gasas anezañ e rabernakl an testeni, evel eur meneg euz a vugale Izrael dirag an Aotrou.

XXXII. Pennad.

Moizez a ro o ledenn da Ruben ha da Had en tu all d'ar Jourdan.

1. Hogen mibien Ruben ha re Gad o-doa kalz a loened, ha dreist-oll eul lod braz a gezeg : pa weljont eta douarou Jazer ha Galaad pere a oa mad evid maga loened,

2. E teujont da gavoud Moizez, hag Aaron ar Beleg-braz, ha priñsed ar bobl, hag e leverjont dezo :

3. Atarot, ha Dibon, ha Jazer, ha Nemra, hag Hesebon, hag Eleale, ha Saban, ha Nebo, ha Beon,

4. Douarou oll en-deus skoet an Aotrou dirag bugale Izrael, a zo eur vro strujuz-braz ha mad evid lakaad al loened da beuri : ha ni da zervijerien on-eus kalz a loened :

5. Ma on-eus kavet trugarez dirazout, ro deom, ni a az ped, an douar-ze e kerz, ha n'ol laka ket da dreuzi ar Jourdan.

6. Ha Moizez a lavaras dezo : Ha mond a ray ho preudeur d'an emgann, hag e chomot-c'hwi da ehana amañ ?

7. Perag e tionalonekait-hu bugale Izrael, evid na gredint ket tremenoud el leh a dle an Aotrou rei dezo ?

8. Ha n'eo ket evel-se e reas ho tadou, pa gasis anezo euz a Gadez-Barne evid gweloud ar vro ?

9. Rag goude beza eet beteg traonienn ar Bod-rezin, ha beza sellet piz ouz ar vro oll, e tionalonekajont bugale Izrael, evid miroud outo n'ez ajent en douar en-doa roet an Aotrou dezo.

10. Hag an Aotrou o vond droug ennañ a douas, o lavaroud :

11. An dud-se a zo deuet euz an Ejipt, adaleg ugent vloaz hag ohpenn, ne welint ket an douar em-boa gouestlet dre le da Abraham, da Izaak ha da Jakob, o veza n'eo ket fellet dezo dond d'am heulia,

12. Nemed Kaleb, mab Jefone, ar Henezead, ha Jozue, mab Nun ; ar re-ze o-deus leuniet va youl.

13. Hag an Aotrou o veza savet droug ennañ a-eneb Izrael, a lakaas anezañ da gantreal en distro e-pad daou-ugent vloaz, ken na oé eet da get an oll ouenn tud he-doa greet an droug-se dirazañ.

14. Ha setu-c'hwi, eme Moizez, a zav e-leh ho tadou, evel bugale ha diskibled tud a behed, evid kreski c'hoaz buanegez an Aotrou a-eneb Izrael.

¹⁹⁵ villenerien : eur milier a zoudarded.

¹⁹⁶ ar hantenerien : hanter-kant soudard.

15. Ma ne fell ket deoh heulia an Aotrou, e tilezo ar bobl en distro, ha c'hwi a vezo kirieg d'o maro oll.

16. Hogen i, o tostaad ouz Moizez, a lavaras dezañ : Sevel a raim krevier evid on deñved, ha staliou evid ol loened, ha kêriou kreñv evid or bugaligou :

17. Hogen ni a aozo on armou, ha ni a yelo d'ar brezel e penn bugale Izrael, ken n'or-bezo o lakaet da vond en o lehiou. Or bugaligou a chomo er hêriou mogeriet, gand kement a hellom da gaoud, evid beza miret dioh heskennou tud ar vro.

18. Ne zistroim ket en on tiez, ken ne biaoou bugale Izrael o degouez :

19. Ha ne houlennim lod ebed en tu all d'ar Jourdan, dre ma on-eus a-vremañ on hini er vro a zo war-zu ar sav-heol euz ar ster-ze.

20. Ha Moizez a lavaras dezo : Mar grit ar pezh hoh-eus lavaret, en em aozit evidid kerzoud dirag an Aotrou d'ar brezel.

21. Kement brezeliad ahnaoh ra dreuzo ar Jourdan hag e armou gantañ, ken n'en-devezo an Aotrou kaset da get e enebourien,

22. Ha ma vezo an oll vro dindan e veli. Neuze e viot didamall dirag an Aotrou ha dirag Izrael, hag ho-pezo en ho kerz dirag an Aotrou an douarou a hoantait.

23. Hogen ma ne rit ket ar pezh a livirit, diarvar eo e pehot a-eneb Doue : ha gouezit penaoz ho pehed a dizo ahanoh.

24. Savit eta kêriou evid ho pugaligou, ha kreveier ha staliou evid ho teñved hag ho loened ; ha grit ar pezh hoh-eus gouestlet.

25. Mibien Gad ha mibien Ruben a lavaras da Voizez : Da zervijerien om ; ober a raim ar pezh a hourmenno an Aotrou.

26. Lezel a raim e kêriou Galaad or bugaligou, or gwraez, or zaout hag ol loened all :

27. Hogen ni da zervijerien en em aozim oll evid kerzoud d'ar brezel, evel ma leverez, te on Aotrou.

28. Moizez eta a reas ar gourhemenn-mañ da Eleazar ar Beleg-braz, ha da Jozue, mab Nun, ha da bennou ar herentiezou e peb breuriez, o lavaroud :

29. Mar treuz mibien Gad ha mibien Ruben ar Jourdan ganeoh, hag i armet oll evid mond d'ar brezel dirag an Aotrou ; pa vezo kouezet ar vro dindan ho peli, roit dezo Galaad e kerz.

30. Hogen ma ne fell ket dezo tremenoud ganeoh, hag i armet, e douar Kanaan, kemerent behiou evid chom en ho mesk.

31. Ha mibien Gad ha mibien Ruben a lavaras : Evel m'en-deus lavaret on Aotrou d'e zervijerien, e raim.

32. Mond a raim, ha ni armet dirag an Aotrou, e douar Kanaan, hag eh anzavom penaoz on-eus bet a-vremañ douar e kerz en tu-mañ euz ar Jourdan.

33. Moizez a roas eta da vibien Gad, ha da vibien Ruben, ha da hanter-vreuriez Manase, mab Jozef, rouantelez Schon, roue an Amorreed, ha rouantelez Og, roue Bazan, hag o bro gand o hêriou tro-war-dro.

34. Goude-ze mibien Gad a zavas Dibon, hag Atarot, hag Aroer,

35. Hag Etrot, ha Sofan, ha Jazer, ha Jegbaa,

36. Ha Betnemra, ha Betaran, kêriou kreñv ; hag e rejont krevier evid o loened.

37. Ha mibien Ruben a zavas Hesebon, hag Eleale, ha Kariataim,

38. Ha Nabo, ha Baalmeon, goude beza troet o anoïou, ha Sabaam : hag i a roas anoïou nevez d'ar hêriou o-doa savet.

39. Hogen mibien Mac'hir, mab Manase, a yeas da vro Halaad ; hag i a wastas anezi, hag a lazas an Amorreed pere a chom enni.

40. Moizez a roas eta bro Halaad da Vac'hir, mab Manase, pehini a chomas enni.

41. Jait, mab Manase, a yeas hag a gemeras he bourhiou, pere a halvas Havot-Jair, da lavaroud eo bourhiou Jair.

42. Nube a yeas ivez, hag a gemeras Kanat gand he bourhiou : hag eñ a halvas anezi Nobe, dioh heh ano heh e-unan.

XXXIII. Pennad.

Arsaoiou an Izraelited en distro.

1. Setu amañ arsaoiou bugale Izrael, pere a zo deuet er-mêz euz an Ejipt, en o bandennou, dindan dorn Moizez hag Aaron.

2. Hag a zo bet danevellet dre skrid gand Moizez, hervez al lehiou e pere e tiazezent o hamp, a guitaent dre hourhemenn an Aotrou.

3. Bugale Izrael o veza eta eet kuit euz a Ramase er miz kenta, ar pemzegved deis euz ar miz kenta, antronoz ar Pask, gand eun dorn uhel¹⁹⁷, dirag an oll Ejiptianed,

4. Pere a vezie o re genta-ganet, a oa bet skoet gand an Aotrou (rag taolet en-doa e veñjañs war o doueed o-unan),

5. A ziazezas o hamp e Sokot.

6. Hag euz a Zokot e teujont da Etam, pehini a zo war harzou an distro.

7. O veza eet kuit ahano, e teujont rag-eneb da Fihahiot, a zell ouz Beelsefon, hag e tiazezent o hamp dirag Magdalum.

8. O veza eet kuit euz a Fihahiot, e tremenjont dre greiz ar mor d'an distro : ha goude beza baleet e-pad tri devez dre zistro Etam, e tiazezent o hamp e Mara.

9. O veza eet kuit euz a Vara, e teujont da Elim, e peleh ez oa daouzeg feunteun zour, ha deg palmezenn ha tri-ugent : hag e tiazezent o hamp eno.

10. Hag o veza eet kuit ahano, e tispjegjont o zeltou ouz ar mor Ruz. Hag o veza eet kuit euz a-dal ar mor Ruz,

11. E tiazezent o hamp e distro Sin.

12. Hag o veza eet kuit ahano, e teujont da Zafka.

13. Hag o veza eet kuit euz a Zafka ; e tiazezent o hamp e Alus.

14. Hag o veza eet kuit euz a Alus, e tispjegjont o zeltou e Rafidim, e peleh ne oa ket a zour da eva d'ar bobl.

15. Hag o veza eet kuit euz a Rafidim, e tiazezent o hamp e distro Sinai.

16. Hag o veza eet kuit euz a zistro Sinai, e teujont d'al leh anvet Besiou ar gwall-youlou.

17. Hag o veza eet kuit euz a Vesiou ar gwall-youlou, e tiazezent o hamp e Haserot.

18. Hag euz a Haserot, e teujont da Retma.

19. Hag o veza eet kuit euz a Retma, e tiazezent o hamp e Remmonfarez.

20. Hag o veza eet kuit ahano, e teujont da Lebna.

21. Euz a Lebna, e tiazezent o hamp e Resa.

22. Hag o veza eet kuit euz a Resa, e teujont da Geelata.

23. Hag o veza eet kuit ahano, e tiazezent o hamp war menez Sefer.

24. Hag o veza eet kuit euz a venez Sefer, e teujont da Arada.

25. Hag o veza eet kuit ahano, e tiazezent o hamp e Maselot.

26. Hag o veza eet kuit euz a Vaselot, e teujont da Dahat.

27. Euz a Zahat, e tiazezent o hamp e Tare.

28. Hag o veza eet kuit ahano, e tiazezent o hamp e Metka :

¹⁹⁷ uhel : savet uhel.

29. Euz a Vekta, e tiazezjont o hamp e Hesmona.
30. Hag o veza eet kuit euz a Hesmona, e tejont da Voserot.
31. Hga euz a Voserot, e tiazezjont o hamp e Benejaakan.
32. Hag o veza eet kuit euz a Venejaakan, e teujont da venez Gadgad.
33. Hag o veza eet kuit ahano, e tiazezjont o hamp e Jetebata.
34. Hag euz a Jetebata, e teujont da Hebrona.
35. Hag o veza eet kuit euz a Hebrona, e tiazezjont o hamp e Asiongaber.
36. Hag o veza eet kuit ahano, e teujont da zistro Sin, pehini eo Kadez.
37. Hag o veza eet kuit euz a Gadez, e tiazezjont o hamp war menez Hor, e harzou douar Edom.
38. Hag Aaron, ar Beleg-braz, o veza pignet war menez Hor, dre hourhemenn an Aotrou, a varvas eno, en deiz kenta euz ar pempved miz euz an daou-ugentved bloaz goude ma oa deuet bugale Izrael er-mêz euz an Ejipt.
39. Hag Aaron oajet euz a dri bloaz ha c’hweh-ugent.
40. Neuze Arad, roue ar Gananeed, pehini a chome war-zu ar hreisteiz, a glevas penaoz bugale Izrael a zeue da vro-Ganaan.
41. Hag o veza eet kuit euz a venez Hor, e tiazezjont o hamp e Salmona.
42. Hag o veza eet kuit ahano, e teujont da Funon.
43. Hag o veza eet kuit euz a Funon, e tiazezjont o hamp e Obot.
44. Hag euz a Obot, e teujont da Jieabarim, pehini a zo war harzou bro ar Voabited.
45. Hag o veza eet kuit euz a Jieabarim, e tispjegjont o zeltou e Dibongad.
46. Hag o veza eet kuit ahano, e tiazezjont o hamp e Helmondeblataim.
47. Hag o veza eet kuit euz a Helmondeblataim, e teujont da veneziou Abarim, rag-eneb da Nabo.
48. Hag o veza eet kuit euz a veneziou Abarim, e tremenjont e kompezennou Moab, ouz ar Jourdan, rag-eneb da Jeriko.
49. Hag eno e tiazezjont o hamp, adaleg Betsimot beteg Abelsatim el lehiou kompesa euz ar Voabited.
50. Hag eno an Aotrou a lavaras da Voizez :
51. Gourhemenn da vugale Izrael, ha lavar dezo : Pa ho-pezo treuzet ar Jourdan, hag e viot eet e douar Kanaan,
52. Kasit da get ar re oll a chom en douar-ze : torrit o mein-harz¹⁹⁸, brevit o skeudennou, ha diskarit o oll lehiou uhel,
53. Evid glannaad an douar, hag evid chom ennañ, rag e roet em-eus deoh e kerz,
54. Hag e rannot anezañ etrezoh dre ar sort. Eul lodenn vrasoh a root d’ar re a vezo kalz, hag eul lodenn vihannoh d’ar re a vezo nebeud. pep hini en-devezo e zegouez dioh ma kouezo ar sort ; ha peb lodenn a vezo rannet hervez ar breuriezou hag ar herentiezou.
55. Ha ma ne fell ket deoh laza ar re oll a chom en douar-ze ; ar re anezo a vezo chomet a vezo evidoh evel tachou en ho taoulagad, hag evel goafiou en ho kosteziou, hag eh enebint ouzoh en douar e pehini e chomot ;
56. Ha kement droug em-boia mennet ober dezo, her grin deoh.

XXXIV. Pennad.

Harzou an douar gouestlet. Anoiou ar re a dle e ranna.

¹⁹⁸ mein-harz : idolou.

1. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Moizez, o lavaroud :
2. Gourhemenn da vugale Izrael, ha lavar dezo : Pa viot eet e douar Kanaan, ha pa viot er herz a vezo degouezet deoh gand ar sort, setu amañ e harzou :
3. Tu ar hreisteiz a vezo e benn kenta e distro ar Sinai, a zo nez da Edom ; bez' en-devezo da harzou ar mor sall, war-zu ar sav-heol.
4. Ar re-mañ a ray an dro euz a zouar ar hreisteiz, dre bignadeg ar grug ; en heveleb doare ma termenint dre Zenna, ha ma en em ledint adaleg ar hreisteiz beteg Kadez-barne, a beleh ez aint beteg ar vourh anvet Adar ; hag en em ledint beteg Asemona.
5. Hag an harzou a yelo, en eur drei, euz a Asemona beteg froud an Ejipt, hag ar penn diweza anezo en em gavo war aod ar mor braz.
6. Hogen tu ar huz-heol a vezo e benn kenta war aod ar mor braz hag e benn diweza ivez.
7. An harzou euz a-du an hanternoz a skoio war ar mor braz, hag a yelo beteg ar menez uhel-braz.
8. Hag ahano ez aint etrezeg Emat, beteg harzou Sedada ;
9. Hag ez aint beteg Zefrona, ha beteg bourh Enan : ar re-ze a vezo e harzou war-zu an hanternoz.
10. An harzou euz a du ar sav-heol a vezo mentet adaleg bourh Enan beteg Sefana.
11. Hag euz a Sefana e tiskennint da Rebla, rag-eneb da feunteun Dafnis : ahano en em hedint war-zu ar sav-heol beteg mor Seneret.
12. Hag ez aint beteg ar Jourdan ; hag ar penn diweza anezo en em gavo war aod ar mor sall-braz. Setu an douar ho-pezo, hag an harzou en-devezo tro-war-dro.
13. Ha Moizez a hourhemennas da vugale Izrael, o lavaroud : Henez a vezo an douar a vezo da gerz deoh dre ar sort, hag en-deus gourhemennet an Aotrou da rei d'an nao breuriez, ha d'an hanter-vreuriez.
14. Rag breuriez Bugale Ruben hervez o herenteziou, ha breuriez Gad hervez an niver euz o zadou, hag an hanter euz a vreuriez Manase,
15. Da lavarodu eo, diou vreuriez hanter, o-deus bet o lodenn en tu-mañ euz ar Jourdan, rag-eneb da Jeriko, war-zu ar sav-heol.
16. An Aotrou a lavaras ivez da Voizez :
17. Setu amañ anioiu ar re a ranno an douar etrezoh : Eleazar ar Beleg-braz, ha Jozue, mab Nun,
18. Hag eur priñs euz a beb breuriez ;
19. Ha setu o anioiu : Euz a vreuriez Juda, Kaleb, mab Jefoen.
20. Euz a vreuriez Simeon, Samuel, mab Ammiud.
21. Euz a vreuriez Benjamin, Elidad, mab Kaselon.
22. Euz a vreuriez mibien Dan, Boki, mab Kaselon.
23. Euz a vreuriez Jozef, euz a vreuriez Manase, Hanniel, mab Efod.
24. Euz a vreuriez Efraim, Kamule, mab Seftan.
25. Euz a vreuriez Zabulon, Elisafan, mab Farnak.
26. Euz a vreuriez Isakar, Flatiel, mab Ozan.
27. Euz a vreuriez Aser, Ahiud, mab Salomi.
28. Euz a vreuriez Neftali, Fedael, mab Ammiud.
29. Ar re-ze eo ar re da bere en-deus gourhemennet an Aotrou ranna douar Kanaan etre bugale Izrael.

XXXV. Pennad.

Kêriou al Levited. Lezenn diwar-benn al lazerez.

1. An Aotrou a lavaras ivez kement-mañ da Voizez e kompezenn Moab ouz ar Jourdan, rag-eneb da Jeriko :
2. Gourhemenn da vugale Izrael rei d'al Levited euz an degoueziou o-deus bet,
3. Kêriou evid chom enno, hag ar fabourziou¹⁹⁹ war o zro ; evid ma chomint er hêriou, ha ma vezo ar fabourziou evid o zaout hag o hezeg.
4. Ar re-mañ, pere a vezo er-mêz euz a vuriou ar hêriou, en em hedo beteg mil kammed tro-war-dro.
5. Daou vil ilinad a-hed o-devezo war-zu ar sav-heol, hag ivez daou vil war-zu ar hreisteiz. Euz an heveleb ment e vezint etrezeg ar mor, a zell ouz ar huz-heol, euz an heveleb ment war-zu an hanternoz : ar hêriou a vezo e-kreiz, hag ar fabourziou er-mêz tro-war-dro.
6. Hogen euz ar hêriou a rood d'al Levited, c'hweh anezo a vezo miret evid beza da vinihi d'an deherien, evid ma hello tehoud etrezeg enno neb en-devezo skuillet gwad eun den : hag ohpenn ar re-mañ, e root c'hoaz diou gêr ha daou-ugent,
7. Da lavaroud eo, eiz kêr ha daou-ugent en oll gand o fabourziou.
8. Ar re euz a vugale Izrael pere o-devezo en o herz muioh a zouar, a roy ivez euz ar hêriou-ze, hag ar re o-devezo nebeutoh, a roy nebeutoh : pep hini dioh e zegouez a roy kêriou d'al Levited.
9. An Aotrou a lavaras ivez da Voizez :
10. Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo : Pa ho-pezo treuzet ar Jourdan, ha pa viov eet e douar Kanaan,
11. Arouezit ar hêriou a dle beza da vinihi d'an deherien, pere o-devezo skuillet gwad eun den a-eneb d'ho youl :
12. Evid na hello ket kar an den lazet dodn da laza an teher a vezo en em dennet enno, ken na vezo hemañ en em ziskouezet dirag ar bobl, ha ma vezo bet barnet e giriegez.
13. Euz ar hêriou-ze pere a vezo rannet evid beza da vinihi d'an deherien,
14. Teir a vezo en tu-mañ d'ar Jourdan, ha teir e douar Kanaan,
15. Evid ma teho enno neb en-devezo skuillet gwad eun den, daoust pe e vezo euz a vugale Izrael, pe eun diavêziad, pe eun tremeniad.
16. Mar sko eur re gand an houarn, ha ma varv an hini a vezo bet skoet, e vezo tamalluz a laz-den ; hag eñ ivez a vezo lakaet d'ar maro.
17. Mar taol eur mên, ha ma varv ouz pehini en-devezo en-devezo e daolet, e vezo kastizet en heveleb doare.
18. Mar varv an hini a vezo bet skoet gand koad, e vezo veñjet gand gwad an hini en-devezo skoet gantañ.
19. Kar an hini a vezo bet lazeta lazo al lazer-den : kerkent ha ma vezo paket gantañ hel lazo.
20. Mar bount eur re eun den dre gas, pe mar taol eun dra gantañ dre wall-youl,
21. Pe, o veza e enebour, mar sko gantañ a-daoliou dorn, ha mar deu hemañ da vervel, an hini en-devezo skoet, a vezo tamalluz a laz-den : ha kar an den lazeta hello e laza kerkent ha ma her have.
22. Mar deo dre zarvoud, hag hep kas,
23. Hag heb drougiez en-deus greet unan euz an traou-ze,
24. Ha mar deo lakaet da wir dirag ar bobl, goude ma vezo bet strivet ar giriegez etre an hini en-devezo skoet ha kar an den lazeta,

¹⁹⁹ fabourziou : bannleoioù.

25. E vezo laosket evel eun den didamall, euz a zorn ar veñjer, hag e vezo kaset adarre dre varn d'ar gêr e pehini e oa bet tehet ; hag e chomo eno, ken na varvo ar Beleg-braz a zo bet sakret gand an eoul santel.

26. Mar bez kavet an hini en-devezo lazet, er-mêz euz ar gêr a zo bet dileuret evid ar re harluet ;

27. Ha mar bez lazet gand ar veñjer ; neb en-devezo e lazet a vezo didamall :

28. Rag an teher a dlee chom er gêr-ze beteg maro ar Beleg-braz ; hogen goude maro hemañ, e tistroy al lazer d'e vro.

29. Kement-mañ a vezo miret evel eul lezenn beurbaduz e kement leh ma chomot.

30. Al laz-den a vezo kastizet goude beza klevet testou : ne vezo barnet den war testeni eun den hepken.

31. Ne zegemerot ket arhant digand an hini a zo tamalluz euz a varo eur re ; hogen raktal e varvo e-unan.

32. Ar re harluet hag an deherien ne hellint ket distrei e neb doare d'o hêriou o-unan a-barz maro ar Beleg-braz :

33. Gand aon na zaotrfeh an douar e pehini e chomot, rag saotret e vez gand gwad ar re zinamm, ha ne hell beza glannaet nemed gand gwad an hini en-devezo skuillet gwad eun all.

34. Evel-se e teuy glan ho touar, hag e chomin ganeoh. Rag me eo an Aotrou a chom e-kreiz bugale Izrael.

XXXVI. Pennad.

Lezenn diwar-benn an dimeziou.

1. Hogen priñsed tudou Galaad, mab Mac'hir, mab Manase euz a ouenn bugale Jozef, a zeuas da gavoud Moizez, hag a lavaras dezañ dirag priñsed Izrael :

2. An Aotrou en-deus gourhemennet dit, te on Aotrou, lodenna an douar dre ar sort etre bugale Izrael, ha rei da verhed Salfaad, or breur, an degouez a oa dleet d'o zad.

3. Ma teu gwazed euz a eur vreuriezh all d'o hemeroud da wragez, o degouez a yelo d'o heul ; hag o veza douget en eur vreuriezh all, e vezo krennet euz on degouez.

4. Hag evel-se e c'hoarvezo penaoz, pa vezo deuet ar Jubile, da lavaroud eo, an hanter-kantved bloaz, pe bloaz an distaol, lodennou ar sort a vezo kemmesket, ha degouez eur re a dremeno d'ar re all.

5. Moizez, diou gourhemenn an Aotrou, a lavaras da vugale Izrael : Gand gwir abeg he-deus komzet breuriezh bugale Jozef :

6. Ha setu amañ al lezenn lakaet gand an Aotrou diwar-benn merhed Salfaad : Dimezent gand neb a girint, gand ma vezo gand gwazed euz o breuriezh :

7. Evid na vezo ket kemmesket degouez bugale Izrael, o tremenoud euz a eur vreuriezh en eur vreuriezh all. Rag an oll wazed a gemero gwragez en o breuriezh hag euz o herentiez :

8. Hag an oll verhed a gemero ezech euz o breuriezh ; evid ma chomo bepred an degoueziou er herentiezou,

9. Ha ne vezo ket kemmesket an eil breuriezh gand eben, hogen ma chomint

10. Evel ma int bet rannet gand an Aotrou. Ha merhed Salfaad a reas evel ma oa bet gourhemennet dezo.

11. Ha Maala, ha Tera, Hag Hegla, ha Melka, ha Noa a zimezas gand mibien o eontr a-berz tad,

12. Euz a gerentiez Manase, mab Jozef : hag an degouez a zo bet roet dezo a chomas e breuriez hag e kerentiez o zad.

13. Ar re-ze eo ar gourhemennou hag ar bardedigeziou a roas an Aotrou dre zorn Moizez da vugale Izrael, e kompezenn Moab, a-hed ar Jourdan, rag-eneb da Jeriko.

An Deuteronom

(Talvezoud ar ra ar ger-ze kement hag “an hini ez eus bet lakaet lezennou nevez“ ennañ gand Moizez).

I. Pennad.

Danevell verr euz ar pez a hoarvezas gand an Israelited en distro.

1. Setu ar pez a lavaras Moizez da oll bobl Izrael en tu-mañ d’ar Jourdan, en eur gompézenn euz an distro, ouz ar mor Ruz, etre Faran, ha Tofel, ha Laban, hag Haserot, e leh ma’z eus kalz a aour.
2. Unneg devez-kerz a zo euz a Horeb dre hent menez Seir betek Kadez-barne.
3. En daou-ugentved bloaz, en unnegved miz, er henta deiz euz ar miz, e lavaras Moizez da vugale Izrael kement en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ da lavaroud dezo,
4. Goude ma oa bet trehet gantañ Sehon, roue an Amorreed, pehini a chome e Hesbon, hag Og, roue Basan, pehini a chome e Astarot, hag e Edrai,
5. En tu-mañ euz ar Jourdan, e bro Moab. Ha Moizez a zeraouas disklêria al lezenn, o lavaroud :
6. An Aotrou on Doue en-deus komzet ouzom e Horeb, o lavarodu : Pell a-walh oh chomet e-tal ar menez-se :
7. Distroit, ha deuit eterzeg menez an Amorreed, hag el lehiou all nez, er hompezennou, er meneziou, en traoniennou war-zu ar hreisteiz, hag a-hed aod ar mor, hag e douar Kanaan, hag el Liban, betek ar ster vraz Euftrat.
8. Setu, emezañ, em-eus roet ar vro-ze deoh : It enni ha perhennit an douar en-deus touet an Aotrou e roje d’ho tadou, da Abraham, da Izaak, ha da Jakob, ha d’ho kouenn da houde.
9. Ha me a lavaras deoh en amzer-ze :
10. Ne hellan ket ober penn deoh va-unan : rag an Aotrou, ho Toue, en-deus ho kresket e niver, hag ez oh hirio ker stank ha stered an neñv.
11. (Ra gresko c’hoz an Aotrou, Doue ho tadou, an niver-ze euz a veur a vil ; ha ra vennigo ahanoh evel m’en-deus e lavaret).
12. Ne hellan ket va-unan ober penn d’ho toaniou, d’ho pehiou, ha d’ho strivou.
13. Roit euz ho touez tud fur ha gouizieg, ha brudet mad en ho preuriezou, evid ma o likiin da bennou warnoh.
14. Neuze e leverjot din : Eun dra vad eo a fell dit da ober.
15. Hag e kemeris euz ho preuriezou tud fur ha brudet-mad, hag e likiis anezo da briñsed, da bennou da vil den, da gant den, da hanter-kant den, ha da zeg den, evid deski deoh pep tra.
16. Hag e hourhemennis dezo, o lavaroud : Selaouit ar re a zeuy d’ho kavoud, ha barnit anezo hervez ar wirionez, daoust pe i a vezo tud ar vro pe tud a-ziavêz bro.
17. Ne vezo evidoh kemm ebed etre an dud : selaoui a reot an hini bihan evel an hini braz ; ha n’ho-pezo azaouez ebed evid den, rag da Zoue eo ar varn. Mar kavit eun dra re ziêz, dougit eñ din, ha me e zelaouo.
18. Ha me a hourhemennas deoh kement a dleeh da ober.
19. O veza eet kuit euz a Horeb, e tremenjom dre an distro vraz hag euzuz, hoh-eus gwelet, dre hent menez an Amorreed, hervez m’en-doa an Aotrou, on Doue, e hourhemennet deom. Ha pa oem deuet da Gatez-barne,
20. E liviris deoh : Setu c’hwia a zo deuet e-tal menez an Amorreed, a dle an Aotrou on Doue da rei deom.

21. Gwel an douar a ro dit an Aotrou da Zoue : pign ha perhenn anezañ, evel ma en-deus an Aotrou on Doue e lavaret d'az tadou : n'az-pezh ket a aon ha na zaouzan ket.

22. Ha c'hwi oll a zeuas d'am havoud, hag a lavaras din : kasom tud evid selloud piz ouz ar vro ; hag i a roy da anaoud deom dre be hent e tleom pigna, hag etrezeg pe hêriou e tleom mond.

23. O veza kavet mad al lavar-ze, e kasis daouzeg den ahanoh, unan euz a beb breuriez.

24. Ar re-mañ en em lakaas en hent, ha goude beza tremenet ar menezioù, e teujont beteg traonienn ar Bod-rezin : ha goude beza sellet piz ouz ar vro,

25. E kemerjont euz a frouez an douar, evid diskoueza deom peger strujuz e oa ; hag o veza o degaset deom, e leverjont : Mad eo an douar a dle an Aotrou on Doue da rei deom.

26. Ha ne fellas ket deoh pigna di ; hag o veza diskredig e-keñver ger an Aotrou on Doue,

27. En em lakejot da groza en ho teltou, hag e leverjot : An Aotrou en-deus kas ouzom, ha dre ze en-deus on tennet euz a zouar an Ejipt, evid ol lakaad etre daouarn an Amorreed, hag evid on dispenna.

28. Peleh e pignim-ni ? Ar re or-boua kaset o-deus lakaet ar spont en or halon, o lavaroud : Niveruz-braz eo ar bobl, hag an dud a zo a zo brasoh egedom : o hêriou a zo braz, hag ar mogerioù anezo a zav beteg an neñv : mibien da Enak on-eus gwelet eno.

29. Ha me a lavaras deoh : N'ho-pezh ket a aon, ha na spontit ket razo.

30. An Aotrou ho Toue, pehini eo ho plénier, a stourmo e-unan evidoh, evel ma en-deus greet en Ejipt dirag an oll.

31. Ha gwelet hoh-eus hoh-unan en distro penaoz en-deus an Aotrou ho Toue ho touget, evel ma eo boazet eun den da zougen e vugel, en oll hent pehini hoh-eus kerzet, ken na oh deuet el leh-mañ.

32. Ha daoust da gement-se, ne gredjot ket d'an Aotrou ho Toue,

33. Pehini a yee en ho raog en hent, a verke deoh al leh e pehini e tleeh displega ho teltou ; pehini a ziskoueze deoh an hent gand ar peul tan e-pad an noz, ha gand ar peul koabr e-pad an deiz.

34. Pa glevas an Aotrou mouez kerioù, ez eas droug ennañ, e touas hag e lavaras :

35. Hini euz ar gwall rumm tud-mañ ne welo an douar mad em-boua touet e rojen d'ho tadou ;

36. Nemed Kaleb, mab Jefone ; rag hennez a welo anezañ, ha me a roy dezañ ha d'e vugale an douar en-deus moustret gand e dreid, o veza ma en-deus heuliet an Aotrou.

37. N'eo ket souezuz buanegez an Aotrou ouz ar bobl, pa eo gwir penaoz e vuanekaa ivez ouzin en abeg deoh, e lavaras : Ha te ivez ne di ket di :

38. Hogen Jozue, mab Nun da zervijer, hennez a yelo di en da leh ; ali ha kreñva anezañ, rag eñ eo a ranno an douar dre ar sort etre bugale Izrael.

39. Ho pugaligoù diwar-benn pere hoh-eus lavaret penaoz e vijent kaset e sklaverez, hag ho pugale pere ne ouzont ket hirio anaoud ar mad dioh an droug, i a yelo e-barz : ha me a roy dezo an douar-ze, hag i a berhenno anezañ.

40. Hogen c'hwi, distroit, hag it d'an distro dre hent ar mor Ruz.

41. Ha c'hwi a lavaras din : Pehet on-eus a-eneb an Aotrou : pigna a raim, hag en em ganna a raim, evel ma en-deus e hourhemennet an Aotrou on Doue. Ha pa gerzoh gand hoh armou etrezeg ar menez,

42. An Aotrou a lavaras din : Lavar dezo : Na bignit ket, ha n'en em gannit ket ; rag n'emaon ket mui ganeoh ; gand aon na gouezjeh dirag hoh enebourien.

43. E lavaroud a ris deoh, ha ne zelaoujot ket ahanon ; hogen oh enebi ouz gourhemenn an Aotrou, ha stambouhet gand ar balhder, e pignot gand ar menez.

44. Hogen an Amorreed, pere a chome war ar meneziou, a ziskennas, a ziambrougas ahanoh, hag en em lakaas war ho lerh, er hiz ma en em laka peurvuia ar gwenan, hag ho tispennas adaleg Seir beteg Horma.

45. O veza distro, pa en em lakejot da ouela dirag an Aotrou, ne zelaouas ket ahanoh, ha ne aotreas ket ho pedenn.

46. Chom a rejot eta pell amzer e Kadez-barne.

II. Pennad.

Ergerz an Izraelited adaleg Kadez-barne beteg bro Sehon.

1. O veza eet kuit ahano, e teujom d'an distro a gas d'ar mor Ruz, evel m'en-doa lavaret an Aotrou din : ha ni a gerzas pell-amzer war-dro da venez Seir.

2. Hag an Aotrou a lavaras din :

3. Kerzet a-walh hoh-eus war-dro d'ar menez-se : it bremañ war-zu an hanternoz :

4. Ha gourhemenn d'ar bobl, o lavaroud : Tremenoud a reot war harzou ho preudeur, bugale Ezan, pere a chom e Seir, hag i a zoujo ahanoh.

5. Likit evez mad eta na dagfeh anezo ; rag ne roin ket deoh euz o bro kement ha ma hell da vaha eun troad hepken ; o veza ma em-eus roet menez Seir e kerz da Ezan.

6. Prena a reot boued diganto gand arhant, hag e tebrot : prena a reot ivez dour, hag eh evot.

7. An Aotrou da Zoue en-deus da venniget en oll labouriou da zaoarn. Eñ a ouie penaoz e tleeh treuzi an distro vraz-se : e-pad daou-ugent vloaz eo bet chomet an Aotrou, da Zoue, ganez, ha n'eo dioueret netra dit.

8. Ha goude ma or-boe tremenet dre zouar bugale Ezan, or breudeur, pere a chome e Seir, o kerzoud dre hent kompezenn Elat hag Asiongaber, e teujom d'an hent a gas da zistro Moab.

9. Hag an Aotrou a lavaras din : N'en em ganni ket ouz ar Voabited, ha ne ri ket a vrezel outo : rag ne roin deoh tamm ebed euz o douar ; o veza ma em-eus roet Ar e kerz da vugale Lot.

10. (An Emimed a zo bet ar re genta o chom er vro-ze, pobl vraz ha galloudeg, ha ken uhel, ma oant kemeret evid beza euz a ouenn Enak,

11. Evel al langouineien ; rag heñvel e oant ouz bugale Enak. En diweza ar Voabited a halv anezo Emimed.

12. Hogen e Seir e chome da genta an Horreed ; ha pa oent bet kaset kuit ha dispennet, bugale Ezan a chomas eno, evel ma en-deus greet Izrael e douar e berhenniez, en-deus roet an Aotrou dezañ).

13. Neuze e savjom evid treuzi froud Zared, hag e teujom etrezeg enni.

14. Hogen an amzer a lakejom evid kerzoud euz a Gadez-barne beteg ma oe treuzet ganeom froud Zared, a oe euz a eiz bloaz ha tregont, ken na oe bevezet euz a greiz ar hamp an oll rumm euz ar vrezelidi genta, evel m'en-doa touet an Aotrou.

15. Rag e zorn a zo bet en o-eneb, evid o lakaad da vervel euz a-greiz ar hamp.

16. Pa oe maro an oll vrezelidi-ze,

17. An Aotrou a gomzas ouzin, o lavaroud :

18. Hirio e tremeni harzou Moab, hag ar gêr anvet Ar :

19. Ha pa dostai ouz douar bugale Ammon, laka evez na stourmi ket outo, ha na vrezekai ket en o eneb ; rag ne roin netra deoh euz a zouar bugale Ammon, o veza ma em-eus e roet e kerz da vugale Lot.

20. (Evid douar al langouineien eo sellet ; ha gwechall e chome ennañ al langouineien a zo anvet Zomzommimed gand an Ammonited ;

21. Eur bobl vraz ha paot 'oa, hag uhel a gorv, evel an Enakied, hag en-deus bevezet an Aotrou a-zirag an Ammonited, pere en-deus lakaet da chom eno en o leh,

22. Evel m'en-doa greet e-keñver bugale Ezau, pere a chom e Seir, pa vevezas an Horreed, hag e roas o bro d'ar re-mañ, pere a zo chomet enni beteg-henn.

23. An Heveed ivez, pere a chome e Haserim beteg Gaza, a oe kaset oll ahano gand ar Gappadosied, pere o veza deuet euz ar Happados a vevezas anezo hag a zeuas da chom en o leh).

24. S avit, ha treuzit froud Arnon : setu em-eus lakaet en da zorn Schon, an Amorread, roue Hesebon : kee da berhenna e vro, ha gra ar brezel outañ.

25. Hirio e teraouin lakaad ar spont hag an euz razout e-touez ar poblou a chom dindan an neñv oll : evid pa glevint da ano, ma teuint da grenna, ha ma vezint dalhet gand ar skrij ha gand ar hloaz e doare eur wreg e gwilioud.

26. Kas a ris eta, euz a zistro Kademot, kannaded etrezeg Schon, roue Hesebon, gand geriou a beoh, o lavaroud :

27. Dre da zouar e tremenim ; dre an hent braz e kerzim : ne droim nag a-zehou nag a-gleiz.

28. Gwerz deom boued evid arhant, ma tebrim, ha ro dour deom evid arhant, ma'h evim. Ol lez hepken da dremenoud dre da vro.

29. Evel ma o-deus greet bugale Ezau, pere a chom e Seir, hag ar Voabited, pere a chom e Ar ; ken na vezim eet ouz ar Jourdan, ha ma vezim tremenet en douar a dle da rei deom an Aotrou on Doue.

30. Hogen Schon, roue Hesbon, ne fellas ket dezañ ol lezel da dremenoud : o veza m'en-doa an Aotrou da Zoue kaledet e spered, ha startaet e galon, evid ma vije lakaet etre da zaouarn, evel ma welez bremañ.

31. Hag an Aotrou a lavaras din : Setu em-eus deraouet lakaad Schon hag e vro etre da zaouarn, deraou ivez piaoua ar vro-ze.

32. Neuze Schon a zeuas da ziarbenna ahanom gand e oll bobl, evid stourmi ouzom e Jaza.

33. Hag an Aotrou on Doue hel lakaas etre on daouarn : ha ni a zispennas anezañ, hag e vibien, hag e oll bobl.

34. En heveleb amzer e kemerjom e oll gêriou, e lazjom an dud oll a oa enno, ar wazed, ar merhed, hag ar vugale ; ha ne lezjom netra enno.

35. Miroud a rejom koulskoude al loened, pere a oe da lod d'ar re o-doa o freizet ; ha diwisk ar hêriou or-boa kemeret,

36. Adaleg Aroer, pehini a zo ouz froud Arnon, eur gêr en em gav en draonienn, beteg Galaad. Ne oe na bourh na kêr a gement a hellas tehoud diou on daouarn : an Aotrou on Doue o roas oll deom ;

37. Nemed douar bugale Ammon, ouz pehini n'om ket tostaet ; ha kement a zo war froud Jebok, ha kêriou ha menezioù, hag an oll lehiou e pere en-doa an Aotrou on Doue divennet deom mond.

III. Pennad.

Brezel a-eneb Og, roue Basan. Doue a zinah da Voizez mond en douar gouestlet.

1. Rag-se e trojom, hag e pignjom dre hent Basan ; hag Og, roue Basan, a zeuas da ziarbenna ahanom gand e oll bobl, evid stourmi ouzom e Edrai.

2. Hag an Aotrou a lavaras din : N'az-pet ket a aon razañ ; rag lakaet eo bet etre da zaouarn gand e oll bobl hag e zouar : ha te a ray dezañ evel ma eh-eus greet da Zehon, roue an Amorreed, pehini a chome e Besebon.
3. An Aotrou on Doue a lakaas eta ivez etre on daouarn Og, roue Basan, hag e oll bobl : hag o lazjom heb ma chomas hini anezo ;
4. Hag en heveleb amzer e wastjom e oll gêriou : ne dehas kêr ebed dioh on daouarn ; tri-ugent kêr a gemerjom, hag oll vro Argob, pehini a oa rouantelez Og e Basan.
5. An oll gêriou-ze a oa kreñveet gand muriou uhel, gand perzier ha barrinier, heb niveri kalz a gêriou pere n'o-doa ket a vuriou.
6. O gwasta a rejom oll, evel ma or-boa greet da Zehon, roue Hesebon, o tiskara e oll gêriou, o laza ar wazed, ar merhed hag ar vugale.
7. Hogen preiza a rejom evidom al loened ha diwisk ar hêriou.
8. Ha ni a gemeras en amzer-ze ar vro euz an daou roue an Amorreed, pere a oa en tu-mañ euz ar Jourdan, adaleg froud Arnon beteg menez Hermon,
9. A zo anvet Sarion gand ar Sidonied, ha Sanir gand an Amorreed ;
10. Hag an oll gêriou a zo er gomezenn, hag oll vro Galaad, ha Basan beteg Selc'ha hag Edrai, kêriou euz a rouantelez Og e Basan.
11. Rag Og, roue Basan, a oa chomet e-unan euz a ouenn al langouineien. Diskoueza a reer c'hoaz e wele houarn e Rabbat, kêr da vugale Ammon ; gwele pehini en-deus nao ilinad a hed, ha pevar ilinad a led hervez ment ilin eun den.
12. Piaoua a rejom eta neuze ar vro-ze, adaleg Aroer, pehini a zo war ribl froud Arnon, beteg kreiz menez Galaad : hag e rois ar hêriou anezi da Ruben ha da Had.
13. Hogen an hanter all euz a Halaad, hag oll vro Basan a oa rouantelez Og, hag oll vro Argob, a rois da hanter-vreuriez Manase. An oll vro Basan-ze a zo anvet douar al langouineien.
14. Jair, mab Manase, en-deus bet oll vro Argob, beteg harzou Gesuri ha Mac'hati. Anvet en-deus dioh e ano Basan, Havot-Jair, evel ma int c'hoaz galvet bremañ.
15. Da Vac'hir e rois ivez Galaad.
16. Hogen da vreuriezou Ruben ha Gad e rois lod euz ar vro Halaad, beteg froud Arnon, beteg kreiz ar froud, hag he harzou beteg froud Jebok, pehini eo harzou bugale Ammon ;`
17. Ha kompezenn an distro, a-hed ar Jourdan, hag harzou Keneret beteg mor an distro, pehini eo ar mor sall-braz, ha beteg troad menez Fasga, war-zu ar sav-heol.
18. Ha me a hourhemennas deoh en amzer-ze, o lavaroud : An Aotrou ho Toue a ro deoh an douar-mañ e degouez ; en em aozit eta evid mond a-raog ho preudeur, bugale Izrael, c'hwi oll dud kreñv :
19. O lezel war ho lerh ho kwragez, ho pugale, hag ho loened. Rag gouzoud a ran penaoz hoh-eus kalz a chatal, ha penaoz e tleont chom er hêriou em-eus roet deoh.
20. Ken na roy an Aotrou an ehan d'ho preudeur, evel ma en-deus e roet deoh ; ha ken n'o-devezo o-unan an douar a dle de rei dezo en tu all d'ar Jourdan. Neuze pep hini ahanoh a zistroy d'an douarou em-eus roet deoh e kerz.
21. En amzer-ze e hourhemennas ivez da Jozue, o lavaroud : Da zaoulagad o-deus gwelet petra en-deus greet an Aotrou ho Toue d'an daou roue-ze : evel-se e ray d'an oll rouanteleziou dre bere e tremeni.
22. N'az-pep ket a aon razo ; rag an Aotrou ho Toue a stourmo evidoh.
23. Ha me a bedas an Aotrou en amzer-ze, o lavaroud :
24. Aotrou Doue, deraouet eh-eus diskoueza d'az servijer da Veurded ha da halloud ; rag n'eus Doue all ebed nag en neñv, na war an douar, a hellfe ober ar pez a rez, ha kaoud eun nerz kevatal d'az hini.

25. Va lez eta da dreuzi ar Jourdan, ma welin an douar ker mad-ze a zo en tu all, hag ar menez ker c’hwek-se, hag al Liban.

26. Hag an Aotrou o veza droug ennañ en abeg deoh, ne zelaouas ket ahanon : hogen lavaroud a reas din : A-walh eo dit ; na gomz mui pelloh din euz a gement-se.

27. Pign war lein menez Fasga, ha tro da zaoulagad tro-war-dro, war-zu ar huz-heol, hag an hanternoz, hag ar sav-heol, ha sell ; rag ne dreuzi ket ar ster Jourdan-ze.

28. Gourhemenn da Jozue, ha nerz ha kreñva anezañ ; rag eñ eo a yelo a-raog ar bobl-mañ, hag a ranno evito an douar a welez.

29. Hag e chomjom en draonienn rag-eneb da dempl Fogor.

IV. Pennad.

Moizez a erbed ar bobl da zenti ouz gourhemennou an Aotrou.

1. Ha bremañ, Izrael, selaou ar helennou hag ar barnedigeziou a zeskan dit ; evid ma o mirot, ha ma vevot ; ha ma ho-pezo an douar e pehini ez it, a dle an Aotrou, Doue ho tadou, da rei deoh.

2. Ne lakeot netra ohpenn d’ar ger a lavaran deoh, ha ne lamot netra anezañ. Mirit gourhemennou an Aotrou, ho Toue, em-eus kemennet deoh.

3. Ho taoulagad o-deus gwelet kement en-deus greet an Aotrou ouz Belfegor ; ha penaoz en-deus brevet euz ho touez e oll azeulerien.

4. Hogen c’hwi pere hoh-eus heuliet an Aotrou ho Toue, emaoñ oll beo beteg hirio.

5. C’hwi a oar penaoz em-eus desket deoh ar helennou hag ar barnedigeziou, evel ma en-deus an Aotrou va Doue e hourhemennet din : evel-se e reot anezo ivez en douar a dleit da gaoud :

6. Hag e virot hag e sevenot anezo dre hoh oberiou. Rag eno ema ho furnez hag ho poell dirag ar poblou, evid pa glevint an oll lezennou-ze, e livirint : Setu eur bobl fur ha poelleg, eur vroad vraz.

7. N’eus pobl all ebed, daoust peger braz eo, a gement he-defe doueed a dosta outi, evel ma ema on Doue en on touez e-pad on oll bedennou.

8. Rag pehini eo ar bobl, daoust peger brudet eo, a gement he-deus lidou ha barnedigeziou gwirion, hag eul lezenn oll, evel ar re a likiin hirio dirag ho taoulagad ?

9. En em vir eta da-unan, ha diwall da ene gand evez. Na ankounac’ha ket an traou o-deus gwelet da zaoulagad, ha n’ez efent ket er-mêz euz da galon e-pad an oll zeiziou euz da vuhez. O deski a ri d’az mibien ha da vibien da vibien.

10. Adaleg an deiz e pehini out savet dirag an Aotrou da Zoue e Horeb, pa gomzas an Aotrou ouzin, o lavaroud : Dastum ar bobl dirazon, evid ma klevint va geriou, ha ma teskint va douja e-keid amzer ma vevint war an douar, ha ma o deskint d’ho pugale.

11. Hag e tostajot ouz traoñ ar menez, pehini a loske beteg an neñv, hag a oa goloet a deñvalijenn, hag a goabr, hag a vrumenn.

12. Hag an Aotrou a gomzas ouzoh euz a-greiz an tan. C’hwi a glevas mouez e heriou, hogen ne weljot doare ebed.

13. Hag eñ a zsikouezas deoh e gevredigez, a hourhemennas deoh da viroud, hag an deg gourhemenn a skrivas war an diou daolenn vên.

14. Hag eñ a hourhemennas din en amzer-ze ma teskjen deoh al lidou hag ar barnedigeziou a dleot da ober en douar a dleit da gaoud.

15. Diwallit eta hoh eneou gand evez. N’hoh-eus gwelet doare ebed en deiz e pehini en-deus komzet an Aotrou ouzoh e Horeb euz a-greiz an tan :

16. Gand aon na veh touellet, ha na rafeh deoh doareou kizellet, pe skeudennou gwaz pe vaouez,

17. Pe skeudennou al loened a zo war an douar, pe an evned a nij dindan an neñv,

18. Pe euz al loened-stlej a fiñv war an douar, pe euz ar pesked a zo en doureier dindan an douar :

19. Gand aon na zavjes da zaoulagad etrezeg an neñv, hag o weloud an heol hag al loar, hag oll stered an neñv, ne vijes touellet, ha na zeujes da azeuli anezo, ha da gaela an traou en-deus krouet an Aotrou da Zoue evid servij an oll vroadou a zo dindan an neñv.

20. Hogen an Aotrou en-deus ho kemeret, hag ho tennet euz a fornigell houarn an Ejipt, evid ma he-divije ar bobl he degouez, evel ma ema hirio.

21. Hag an Aotrou a zavas droug ennañ ouzin en abeg d'ho klemmou, hag a douas penaoz ne dreuzjen ket ar Jourdan, ha ne dajen ket er vro vad-meurbed-se, a dle da rei deoh.

22. Setu e varvin el leh-mañ, ha ne dreuzin ket ar Jourdan : hogen c'hwi a dreuzo anezi, hag ho-pezo ar vro-vad-meurbed-se.

23. Laka evez na ankounac'hai biken kevredigez an Aotrou da Zoue, en-deus greet ganez ; ha na rajes dit doareou kizellet gand an traou en-deus berzet an Aotrou da ober :

24. Rag an Aotrou da Zoue a zo eun tan gwastuz hag eun Doue oazuz.

25. Mar deu deoh, mibien ha mibien-vihan, ha mar chomit pell en douar-ze, hag o veza bet touellet, mar grit deoh eun doare bennag oh ober droug dirag an Aotrou ho Toue, evid e lakaad da vond droug ennañ :

26. Me a halvo hirio da dest an neñv hag an douar, penaoz e viot a-barz nemeur dismantret euz an douar, a dleit da gaoud pa ho-pezo treuzet ar Jourdan : na chomot ket pell amzer ennañ, hogen an Aotrou ho pevezo,

27. Hag ho skigno e-mesk an oll boblou ; ha nebeud ahanoh a chomo e-mesk ar broadou, e pere e tle an Aotrou ho kas.

28. Hag eno e kaelot Doueed greet gand dorn an dud, prenn ha mein, pere na welont ket, na glevont ket, na zebront ket, na hwesaont ket.

29. Ha mar klaskez eno an Aotrou da Zoue, e kavi anezañ ; gand ma her hlaski a-greiz da galon, hag e oll vantr da ene.

30. Goude ma vezo bet c'hoarvezet ganez kement a zo bet diouganet en amzer ziweza, e tistroi ouz an Aotrou da Zoue, hag e selaoui e vouez,

31. O veza ma eo an Aotrou da Zoue, eun Doue trugarezuz, n'az tilezo ket, ha n'az pevezo ket a-grenn, ha ne ankounac'hai ket ar gevredigez en-deus touet d'az tadou.

32. Goulenn digand an deiziou kent a zo bet en da raog, abaoe an deiz e pehini en-deus Doue krouet an den war an douar, euz an eil penn d'ar penn all euz an neñv, mar deo c'hoarvezet eun heveleb tra, ha mar deo bet klevet biskoaz,

33. Penaoz he-defe klevet eur bobl mouez Doue a gomze euz a-greiz an tan, evel ma eh-eus klevet, ha te beo ;

34. Penaoz e vije deuet Doue, hag en-divije kemeret evitañ eur bobl euz a-greiz ar broadou, gand arnodou, gand aroueziou, ha gand burzudou, gand stourm, ha gand eun dorn kreñv, ha gand eur vreh astennet, ha gand gweledigeziou euzuz, hervez kement en-deus greet an Aotrou ho Toue evidoh en Ejipt, dirag da zaoulagad,

35. Evid ma oufes penaoz an Aotrou 'zo Doue e-unan, ha penaoz n'eus Doue all nemetañ.

36. Lakaet en-deus dit klevoud e vouez euz an neñv evid da zeski, ha diskouezet en-deus dit war an douar e dan braz-meurbed, ha klevet eh-eus e heriou euz a-greiz an tan ;

37. O veza ma en-deus karet da dadou, ha ma en-deus dilennet o gouenn war o lerh. Ha da dennet en-deus euz an Ejipt, o kerzoud en da raog, gand e halloud braz.

38. Evid ma vevezje broadou braz-meurbed ha kreñvoh egedout pa'z ajes e-barz : evid da lakaad da vond e-barz, ha rei dit o bro e kerz, evel ma welez hirio.

39. Gouez eta hirio, ha menn en da galon, penaoz an Aotrou 'zo Doue e-unan en neñv a-uz, ha war an douar a-iz, ha penaoz n'eus ket a Zoue all.

40. Mir e gelenou hag e hourhemennou a gemennan dit ; evid ma teuy vad dit, ha d'az pugale da houde, ha ma chomi pell amzer war an douar a dle an Aotrou da Zoue da rei dit.

41. Neuze Moizez a rannas teir hêr en tu-mañ euz ar Jourdan war-zu ar sav-heol,

42. Evid ma teho enno neb en-devezo lazet e nesa a-eneb d'e youl, hag beza bet enebour dezañ kent nag en eun deiz nag en eun all, ha ma hello tehoud e-unan euz ar hêriou-ze :

43. Bosor en distro, pehini a zo diazezet er gompezenn-zouar euz a vreuriezh Ruben ; ha Ramot e Galaad, a zo euz a vreuriezh Gad ; ha Golan e Basan, a zo euz a vreuriezh Manase.

44. Setu amañ al lezenn a lakaas Moizez dirag bugale Izrael :

45. Ha setu amañ an testeniou, hag al lidou, hag ar barkedigeziou, a lavaras da vugale Izrael, goude ma oant deuet er-mêz euz an Ejipt,

46. En tu-mañ euz ar Jourdan, en draonienn a zo rag-eneb da dempl Fogor, e bro Sehon, roue an Amorreed, pehini a chome en Hesebon, hag a zo bet dispennet gand Moizez. Ha bugale Izrael, goude beza deuet er-mêz euz an Ejipt,

47. A biaouas e vro, ha bro Og, roue Basan, daou roue an Amorreed, pere a oa en tu-mañ d'ar Jourdan, war-zu ar sav-heol ;

48. Adaleg Aroer, a zo diazezet war ribl froud Arnon, beteg menez Sion, a anver ivez Hermon,

49. An oll gompezenn en tu-mañ d'ar Jourdan war-zu ar sav-heol, beteg mor an distro, ha beteg traoñ menez Fasga.

V. Pennad.

Moizez a zegas da goun d'ar bobl an deg gourhemenn.

1. Ha Moizez a halvas oll Izrael, hag a lavaras dezañ : Selaou, Izrael, al lidou hag ar barkedigeziou a roan hirio da glevoud deoh : deskit o, ha sevenit o.

2. An Aotrou on Doue en-deus greet kevredigez ganeom e Horeb.

3. N'eo ket gand on tadou en-deus greet kevredigez, hogen ganeom, ni pere a zo, hag a vev hirio.

4. Dremm-oh-dremm en-deus komzet ouzom war ar menez euz a-greiz an tan.

5. Me a oe en amzer-ze unvaner hag hanterour etre an Aotrou ha c'hwi, evid rei da anaoud deoh e heriou, rag c'hwi ho-poe aon rag an tan, ha ne bignjot ket war ar menez ; hag eñ a lavaras :

6. Me eo an Aotrou da Zoue, en-deus da dennet euz a zouar an Ejipt, euz a vro ar sklaverez.

7. N'az-pezo ket a Zoue all dirazon.

8. Ne ri ket a skeudenn evidout, na taolenn ebed euz ar pez a zo en neñv a-uz, ha war an douar a-iz, nag euz ar pez a zo en doureier dindan an douar.

9. N'o azeuli ket, ha ne lidi ket anezo. Rag me eo an Aotrou da Zoue, Doue oazuz, pehini a zistaol fallagriez an tadou war ar vugale beteg an trede hag ar pevare rumm euz ar re a gasa ahanon ;

10. Hag a ra trugarez a-hed mil rumm d'ar re am har, hag a vir va gourhemennou.
11. Ne gemeri ket ano an Aotrou da Zoue en aner ; rag ne vezo ket digastiz neb en-devezo kemeret e ano diwar-benn eun dra wan.
12. Mir deiz ar sabat, evid ma santaelli anezañ, evel ma en-deus an Aotrou da Zoue e hourhemennet dit.
13. E-pad c'hweh devez e labouri, hag e ri da oll labouriou.
14. Ar seizved deiz eo ar sabat, da lavaroud eo, ehan an Aotrou da Zoue. Ne ri labour ebed ennañ, te, na da vab, na da verh, na da vevel, na da vatez, na da ejenn, na da azen, nag hini eta euz da loened, nag an diavêziad a vezo en ho touez, evid ma ehano da vevel ha da vatez, eveldout da-unan.
15. Az-pezh koun penaoz out bet sklav da-unan en Ejipt, ha penaoz an Aotrou da Zoue en-deus da dennet ahano gand eun dorn kreñv, hag eur vreh astennet. Rag-se eo en-deus gourhemennet dit miroud deiz ar sabat.
16. Enor da dad ha da vamm, evel ma en-deus an Aotrou da Zoue e hourhemennet dit, evid ma vevi pell amzer, ha ma teuio pep tra da vad dit en douar a dle an Aotrou da Zoue da rei dit.
17. Ne lazi ket.
18. Ne gouezi ket en avoultriez.
19. Ne laeri ket.
20. Ne zougi ket a desteni e gaou a-eneb da nesa.
21. Ne hoantai ket gwreg da nesa ; nag e di, nag e bark, nag e vevel, nag e vatez, nag e ejenn, nag e azen, na netra euz a gement a zo dezañ.
22. An Aotrou a lavaras ar geriou-ze deoh oll dastumet war ar menez, euz a-greiz an tan, ar hoabr, hag an deñvalijenn, gand eur vouez kreñv, heb lavaroud netra ohpenn : hag e skrivas anezo war diou daolenn vên a roas din.
23. Hogen c'hwi goude ma ho-poe klevet ar vouez euz a-greiz an deñvalijenn, ha ma ho-poe gwelet ar menez o leski, e teujot d'am havoud, hag oll briñsed ar breureziou, hag an henaoured, hag e leverjot :
24. Setu an Aotrou on Doue en-deus diskouezet deom peger braz ha pegen uhel eo : e vouez on-eus klevet euz a-greiz an tan ; hag on-eus anavezet hirio penaoz en-deus komzet Doue ouz eun den, hag eo beo an den.
25. Perag eta e varvim-ni, hag e teuy an tan braz-se d'or gwasta ? Rag mar klevom pelloh mouez an Aotrou on Doue, e varvim.
26. Rag petra eo an oll gig, ma klevo mouez an Doue beo, pehini a gomz euz a-greiz an tan, evel ma on-eus klevet, hag a hello beva ?
27. Tosta te kentoh, ha selaou kement a lavaro dit an Aotrou on Doue ; ha te a gomzo ouzom, ha ni her hlevo hag her gray.
28. Pa glevas an Aotrou kement-se, e lavaras din : Klevet em-eus mouez ar bobl-se hag ar geriou he-deus lavaret dit : lavaret mad eo bet oll ganto.
29. Piou a roy dezo eun heveleb skiant ma toujint ahanon, ha ma virit va oll hourhemennou e peb amzer, evid ma teuio pep tra da vad dezo ha d'o mibien da viken ?
30. Kee, ha lavar dezo : Distroit d'ho teltou.
31. Hogen te, chom amañ ganen, ha me a lavaro dit va oll hourhemennou, hag al lidou, hag ar barnedigeziou ; o deski a ri dezo, evid ma o graint en douar a roin dezo e kerz.
32. Mirit eta ha grit ar pezh ar pezh en-deus gourhemennet an Aotrou Doue deoh : ne zistroot nag a-zehou, nag a-gleiz :

33. Hogen kerzoud a reot dre an hent en-deus gourhemennet an Aotrou ho Toue deoh, evid ma vevot, ha ma vezo vad deoh, ha ma vezo astennet ho teiziu e douar ho kerz.

VI. Pennad.

Moizez a erbed ar bobl da garoud Doue a-greiz kalon, ha da viroud e lezenn.

1. Setu amañ ar helennou, hag al lidou, hag ar barnedigeziou, en-deus gourhemennet an Aotrou ho Toue din da zeski deoh, evid ma o greot en douar e pehini e tleit da dremenoud, hag a vezo en ho kerz :
2. Evid ma touji an Aotrou da Zoue, ha ma viri e oll gelennou hag e hourhemennou, a gemennan dit ; ha d'az mibien, ha da vibien da vibien, e-pad an oll zeiziu euz da vuhez, evid ma vezo hirreet da vuhez.
3. Selaou, Izrael, ha laka evez da ober ar pezh en-deus gourhemennet an Aotrou dit, evid ma vezo vad dit, ha ma kreski e niver muioh-mui, evel ma en-deus lavaret an Aotrou, Doue da dadou, e roje dit eun douar e pehini e tiverrje lêz ha mel.
4. Selaou, Izrael, an Aotrou on Doue, a zo an Aotrou hepken.
5. Karoud a ri an Aotrou da Zoue a-greiz da galon, hag a-greiz da ene, hag a-greiz da nerz :
6. Hag ar geriou-mañ, a hourhemennan dit hirio, a vezo en da galon :
7. Ha te a zanevello anezo d'az pugale ; hag az-pezo soñj enno pa vezi azezet en da di, ha pa gerzi en hent, pa gouski, ha pa zavi.
8. Hag eh erei anezo evel eun arouez en da zorn ; hag i a vezo hag a luho etre da zaoulagad.
9. Hag e skrivi anezo war dreuzou ha war dor da di.
10. Ha pa en-devezo an Aotrou da Zoue da lakaet da vond en douar, evid pehini en-deus touet d'az tadou, da Abraham, da Izaak, ha da Jakob ; ha ma en-devezo roet dit kêriou braz ha mad-meurbed, pere n'eh-eus ket diazezet,
11. Tiez leun a beb madou²⁰⁰, pere n'eh-eus ket savet : puñsou, pere n'eh-eus ket toullet ; parkou gwini ha parkou olivez, pere n'eh-eus ket plantet,
12. Ha m'az-pezo debret, ha ma'z-pezo bet da walh :
13. Laka evez mad na deufes da ankounac'haad an Aotrou, pehini en-deus da dennet euz a vro an Ijipt, euz a vro ar sklaverez. Douja a ri an Aotrou da Zoue, ha ne zerviji nemetañ, ha dre e ano e toui.
14. N'ez eot ket war-lerh an doueed a-ziavêz euz an oll vroadou a zo war-dro deoh.
15. Rag eun Doue oazuz eo an Aotrou da Zoue en da greiz ; gand aon na zavje buanegez an Aotrou da Zoue en da eneb, ha n'az tennje diwar horre an douar.
16. Ne dempti ket an Aotrou da Zoue, evel ma eh-eus e dempet e leh an demptasion.
17. Mir kelennoù an Aotrou da Zoue, hag an testenioù, hag al lidou en-deus gourhemennet dit :
18. Ha gra ar pezh a zo hetuz ha mad dirag an Aotrou, evid ma vezo vad dit, ha ma'z i da berhenn en douar mad-meurbed, diwar-benn pehini en-deus touet an Aotrou d'az tadou ;
19. Evid am vevezje da oll enebourien dirazout, evel ma en-deus lavaret.

²⁰⁰ a beb madou : iskiz : a beb tra vad.

20. Ha pa houlenno da vab diganez goude-henn, o lavaroud : Petra eo an testeniou-ze, hag al lidou, hag ar barnedigeziou, en-deus gourhemennet an Aotrou on Doue deom ?

21. E liviri dezañ : Ni a oa sklaved da Faraon en Ejipt, hag an Aotrou en-deus on tennet euz an Ejipt gand eun dorn kreñv.

22. Ha greet en-deus aroueziou ha burzudou braz ha spontuz en Ejipt a-eneb Faraon hag e oll di, dirazom ;

23. Hag on tennet en-deus ahano, evid ol lakaad da zond en douar en-doa lavaret gand le d'on tadou e roje deom.

24. Hag an Aotrou en-deus gourhemennet deom miroud an oll lezennou-ze, ha douja an Aotrou on Doue, evid ma vezo vad deom e-pad an oll zeiziou euz or buhez, evel ma eo hirio.

25. Hag eñ a vezo trugarezuz en or heñver, mar mirom ha mar sevenom e oll gelenno dirag an Aotrou on Doue, evel ma en-deus e hourhemennet deom.

VII. Pennad.

Divennet eo ober kevredigez ebed gand ar broadou. Kred euz a skoazell an Aotrou.

1. Pa en-devezo an Aotrou da Zoue da lakaet da vond en douar a dleez kaoud en da gerz, ha pa en-devezo bevezet dirazout kalz broadou, an Heteed, hag ar Gergezeed, hag an Amorreed, hag ar Gananeed, hag ar Ferezeed, hag an Heveed, hag ar Jebuzeed, seiz broad kalz stankoh ha kreñvoh egedout ;

2. Ha pa en-devezo an Aotrou da Zoue o lakaet etre da zaouarn, e tispenni anezo, heb ma chomo hini ebed. Ne ri ket a gevredigez ganto, ha n'az-pezo trugarez ebed evito ;

3. Ha n'en em unvani ket ganto dre zimeziou. Ne roi ket da verhed d'o mibien, ha ne gemeri ket o merhed evid da vibien :

4. Pa Rag touella a raint da vibien, evid na heuillint ket ahanon hag evid ma kaelint kentoh Doueed a-ziavêz : ha froudenn an Aotrou a zavo ouzit, hag e vevezo buan ahanoh.

5. Hogen evel-henn e reot dezo : Diskarit o aoteriou, ha torrit o skeudennou, ha pilit d'an douar o hoajou-lid, ha loskit o hizelladuriou.

6. Rag eur bobl santel out d'an Aotrou da Zoue. An Aotrou da Zoue en-deus da zilennet, evid ma vezi eur bobl a-du dezañ e-unan e-kreiz an oll boblou a zo war an douar.

7. N'eo ket dre ma'z oh brasoh e niver eged an oll boblou, eo en em unanet an Aotrou ganeoh, hag en-deus ho tilennet ; rag bihannoh oh e niver eged an oll boblou :

8. Hogen o veza ma en-deus ho karet an Aotrou, ha ma en-deus miret e le en-deus touet d'ho tadou : hag en-deus ho tennet gand eun dorn kreñv, hag ho tasprenet euz a vro ar sklaverez, euz a zorn Faraon, roue an Ejipt.

9. Ha gouzoud a ri penaoz an Aotrou da Zoue a zo e-unan an doue kreñv ha feal, pehini a vir kevredigez ha trugarez d'ar re e gar, ha d'ar re a vir e gelenno, 'hed mil rumm :

10. Hag e kastiz raktal ar re o-deus kas outañ, en heveleb doare ma o holl, heb dale ebed, oh ober dezo kerkent ar pez a zo dleet dezo.

11. Mir eta ar helennou, hag al lidou, hag ar barnedigeziou a gemennan dit hirio da ober.

12. Goude m'az-pezo klevet ar bardedigeziou-mañ, ma o mirez ha ma o grez, an Aotrou da Zoue a viro ivez en da geñver ar gevredigez hag an drugarez en-deus touet d'az tadou :

13. Hag e karo hag e paoto ahanout, hag e vennigo frouez da gov, ha frouez da zouar, da ed, ha da win, ha da eoul, ha da zaout, ha da dropellou deñved en douar en-deus touet d'az tadou e roje dit.

14. Benniget e vezi etre an oll boblou. Ne vezo ket en da douez a vrehagn nag en eur reiz, nag en eben, nag en dud, nag en da loened.

15. An Aotrou a denno diouzit peb gwander, ha ne lakay ket da zevel ennout goulou droug an Ejipt a anavezaz ; hogen e-touez da oll enebourien.

16. Gwasta a ri an oll boblou a dle an Aotrou da Zoue da rei dit. N'az-pezo truez ebed oh o gweloud, ha ne gaeli ket o doueed, gand aon na vent kirieg da gas ahanout da goll.

17. Ma levezaz en da galon : Paotou eo ar broadou-ze egedon ; penaoz e hellin-me o bevezi ?

18. N'az-peza ket a aon, hogen az-peza koun euz a gement en-deus greet an Aotrou da Zoue da Faraon, ha d'an oll Ejiptianed :

19. Euz ar goulou braz, o-deus gwelet da zaoulagad, hag euz an aroueziou, hag euz ar burzudou, hag euz an dorn kreñv, hag euz ar vreh astennet, gand pere en-deus da dennet an Aotrou da Zoue : evel-se e ray d'an oll boblou rag pere eh-eus aon.

20. Ohpenn-ze e kaso an Aotrou da Zoue sardoned en o zouez, ken n'en-devezo bevezet ha kollet ar re oll a vezo tehet dirazout, hag o-devezo gallet en em guza.

21. N'az-peza ket a aon raso, rag an Aotrou da Zoue a zo en da greiz, Doue braz ha kreñv-meurbed.

22. Eñ eo a vevezo ar broadou-ze dirazout a-nebeud-e-nebeud hag a-lodennou. Ne helli ket o dispenna war eun dro, gand aon na zeufe loened an douar da greski e niver ouzit.

23. Hag an Aotrou da Zoue a roy anezo dit : hag e lazo anezo ken na vezint eet da get.

24. Hag e lakay o roueed etre da zaouarn, hag e tenni o anoioù a-zindan an neñv. Ne hello hini enebi ouzit, ken n'az-pezo o brevet.

25. O hizelladurioù a loski gand an tan. Ne hoantai ket an arhant hag an aour gand pere int greet, ha ne gemeri netra anezo evidout, gand aon na fazijez ; rag argarziged an Aotrou da Zoue eo.

26. Na zegasi netra euz an idol en da di, gand aon na zeufes da veza milliget eveltañ. Evel eun dra hudur oh heugi anezañ, hag evel eun dra louz ha saotr eh argarzi anezañ ; rag eun dra villiget eo.

VIII. Pennad.

Moizez a erbed ar bobl da gaoud koun euz a drugareziou Doue.

1. Laka evez mad da viroud gand preder kement gourhemenn a gemennan dit hirio ; evid ma hellot beva, ha kreski e niver, ha kaoud an douar e pehini ez it, diwar-benn pehini en-deus an Aotrou touet d'ho tadou.

2. Ha koun az-pezo euz an oll hent dre behini en-deus da gaset an Aotrou da Zoue e-pad daou-ugent vloaz dre an distro evid da gastiza, ha da arnodi, hag evid anaoud ar peza a droe en da galon, pe te a virje e hourhemennou, pe ne rajez ket.

3. Da hlaharet en-deus gand an naon, ha roet en-deus dit da voued ar mann, pehini a oa dizanav dit ha d'az tadou ; evid ma tigouezje dit penaoz n'eo ket gand bara hepken e vev an den, hogen gand pep ger a zeu er-mêz euz a henou Doue.

4. An dillad gand pere e oas goloet n'int ket bet koazet gand an amzer ; ha da droad n'eo ket bet brevet, ha setu an daou-ugent vloaz.

5. Soñj eta en da galon penaoz, evel ma tesk an den e vab e-unan, evel-se en-deus da zesket an Aotrou da Zoue.

6. Evid ma viri gourhemennou an Aotrou da Zoue, ha ma kerzi en e heñchou, ha ma touji anezañ.

7. Rag an Aotrou da Zoue az lakay da vond en eun douar mad, eun douar a houeriou, hag a zoureier, hag a feunteuniou ; e pehini eien ar steriou a darz er hompezennou hag er menezioù ;

8. Douar gwiniz, heiz, ha gwini, e pehini e tiwan ar gwez-fiez, ar gwez-grenad, hag ar gwez-olived ; douar eoul ha mel ;

9. E pehini e tebri da vara heb dienez ebed, hag e fonni pep tra ; e pehini ar vein a zo houarn, hag e tenner an arem euz e veneziou :

10. Evid, pa'z-pezo debret ha pa'z-pezo da walh, ma vennigi an Aotrou da Zoue evid an douar mad-meurbed en-deus roet dit.

11. Mir ha diwall na ankounac'hai biken an Aotrou da Zoue, ha na zeujes da zilezel e gelennou, hag e varnedigeziou, hag e lidou, a hourhemennan dit hirio :

12. Gand aon, goude ma'z-pezo debret, ha ma'z-pezo bet da walh, ha ma'z-pezo savet tier kaer, ha ma vezi eet da chom enno ;

13. Ha ma'z-pezo bet tropellou saout ha deñved, hag e-leiz a arhant, a our hag a bep tra,

14. Na zeuy da galon da hweza, ha na ankounac'hai ket an Aotrou da Zoue, pehini en-deus da dennet euz a zouar an Ejipt, euz a vro ar sklaverez :

15. Ha pehini a zo bet da vlenier dit en eun distro vraz hag euzuz, e peleh ez oa naered hag a loske gand o hwez, ha kruged, ha dipsaded²⁰¹, ha dour ebed : pehini en-deus tennet goueriou euz ar vein ar haleta ;

16. Ha pehini en-deus da vouetet en distro gand mann, pehini a oa dianav d'az tadou. Ha goude m'en-doe da hlaharet ha da arnodet, en-doe en diwez truez ouzit ;

17. Gand aon na lavarfes en da galon : Va nerz va-unan, ha va dorn kreñv eo, o-deus aozet kement-mañ din.

18. Hogen ma'z-pezo koun euz an Aotrou da Zoue, ha penaoz eo eñ e-unan en-deus roet dit da nerz, evid ma sevenje e gevredigez, diwar-benn pehini en-deus touet d'az tadou, evel ma tiskouez an deiz a hirio.

19. Hogen oh ankounac'haad an Aotrou da Zoue, ma heuliez doueed a-ziavêz, ma kaelez ha ma azeulez anezo : setu e tiouganen dit hirio penaoz e vezi bevezet a-grenn.

20. Evel ar broadou en-deus bevezet an Aotrou pa out deuet e-barz, en heveleb doare e viot bevezet, ma ne zentit ket ouz mouez an Aotrou ho Toue.

IX. Pennad.

Moizez a zegas da goun d'an Izraelited o hrozou hag o displealded kent.

1. Selaou, Izrael : hirio e treuzi ar Jourdan, evid perhenna broadou brasoh ha kreñvoh egedout, kêriou braz gand mogerioù a zav beteg an neñv.

²⁰¹ dipsaded : skorponed, kruged.

2. Eur bobl vraz hag uhel, mibien Enak, eh-eus gwelet ha klevet da-unan, ouz pehini, war a leverer, den ne hell enebi.

3. Gouzoud a ri eta hirio penaoz an Aotrou da Zoue a dremeno e-unan en da raog, evel eun tan gwastuz ha bevezuz, pehini o brevo, o bevez, o haso da get dirazout e berr-amzer, evel ma en-deus e lavaret dit.

4. Na lavar ket en da galon, goude ma en-devezo an Aotrou da Zoue o bevezet dirazout : Eun abeg d'am reizded eo en-deus an Aotrou va lakaet da vond en douar-mañ evid e gaoud em herz, pa eo gwir penaoz ar broadou-ze a zo bet bevezet en abeg d'o fallagriez.

5. Rag n'eo ket eun abeg d'az reizded, na da eeunder da galon, e vezi eet en douar-ze, evid e berhenna, hogen pa'z i e-barz e vezint bevezet, en abeg d'o fallagriez ; hag evid ma seveno an Aotrou ar ger en-deus roet gand le d'az tadou, da Abraham, da Izaak, ha da Jakob.

6. Gouez eta penaoz n'eo ket en abeg d'az reided e roy dit an Aotrou da Zoue an douar ker mad-ze e kerz, pa eo gwir ez out eur bobl kaled-braz a benn.

7. Az-pezh koun, ha na ankounac'ha ket penaoz eh-eus tennet warnout buanegez an Aotrou da Zoue en distro. Abaoe an deiz-se e pehini out deuet er-mêz euz an Ejipt beteg al leh-mañ, eh-eus bepred enebet ouz an Aotrou.

8. Rag e Horeb zoken eh-eus enebet outañ, hag eñ o vuanekaad a fellas dezañ da vezezi.

9. Pa bignis war ar menez, evid degemeroud an taolennou mein, taolennou ar gevredigez a reas an Aotrou ganeoh : hag e chomis bepred war ar menez e-pad daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez, heb debri bara, nag eva dour.

10. Hag an Aotrou a roas din an diou daolenn vên skrivet gand biz Doue, war bere ez oa an oll heriou a lavaras deoh war ar menez euz a-greiz an tan, pa edo dastumet an oll bobl.

11. Ha pa oa tremenet an daou-ugent devez hag an daou-ugent nozvez, an Aotrou a roas din an diou daolenn vên, taolennou ar gevredigez ;

12. Hag a lavaras din : Sao, ha diskenn buan ahann ; rag da bobl, pehini eh-eus tennet euz an Ejipt, o-deus²⁰² dilezet raktal an hent az-poa diskouezet dezo, hag o-deus greet evito eur skeudenn deuz²⁰³.

13. An Aotrou a lavaras c'hoaz din : Gweloud a ran penaoz ar bobl-se a zo kaled a benn.

14. Va lez da ober, ha me a vrevo anezo, hag a denno o ano euz a-zindan an neñv, ha me az lakay da benn da eur bobl hag a vezo brasoh ha kreñvoh eged houmañ.

15. Ha pa ziskennen diwar ar menez entanet, o terhel an diou daolenn a gevredigez a zaou zorn,

16. Ha pa welis penaoz ho-poa pehet a-eneb an Aotrou ho Toue, hag ho-poa greet evidoh eul leue teuz, hag ho-poa dilezet raktal e hent, en-doa diskouezet deoh ;

17. E taolis an taolennou euz va daouarn, hag e torris anezo dirazoh.

18. Hag en em strinkis da dreid an Aotrou evel kent, hag e-pad daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez ne zebris ket a vara, ha ne evis ket a zour en abeg d'an oll behejou ho-poa greet a-eneb d'an Aotrou, ha dre bere ho-poa tennet e vuanegez warnoh.

19. Rag aon em-boia rag ar froudenn hag ar vuanegez a oa savet ennañ ouzoh, beteg ma felle dezañ ho kas da get. Hag an Aotrou a zelaouas c'hoaz ouzin ar wech-se.

20. Droug braz o veza savet ivez ennañ ouz Aaron, e fellas dezañ e vezezi ; hag e pedis ivez evitañ.

²⁰² o-deus : he-deus ar bobl = an dud). dezo , idem ; o-deus greet, he-deus greet.

²⁰³ eur skeudenn deuz : eur skeudenn e houarn teuz.

21. Hogen ho pehed, da lavaroud eo, al leue ho-poa greet, a gemeris, a zevis en tan, hag a vrevis a-vunudou ; ha goude beza e lakaet e poultr a-grenn, e taolis anezañ er froud a ziskenn euz ar menez.

22. Heget hoh-eus ivez an Aotrou e leh an Entan, hag e leh an Temptasion ; hag e leh Beziou ar gwall-youlou :

23. Ha pa gasas ahanoh euz a Gadez-barne, o lavaroud : Pignit, ha perhennit an douar em-eus roet deoh : c'hwi a zispizas gourhemenn an Aotrou ho Toue, ha ne gredjoh ket ennañ, ha ne fellas ket deoh selaoui e vouez :

24. Hogen en em zispahet hoh-eus outañ adaleg an deiz e pehini em-eus anavezet ahanoh.

25. Hag en em daolis dirag an Aotrou e-pad daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez, hag e pedis stard anezañ, na vevezje ket ahanoh, evel m'en-doa gourdrouzet e raje :

26. Hag o pedi e liviris : Aotrou Doue, na goll ket da bobl, ha da zegouez, eh-eus dasprenet en da veurded, eh-eus tennet euz an Ejipt gand eun dorn kreñv.

27. Az-pezh koun euz da zervijerien Abraham, Izaak ha Jakob : na zell ket ouz kaleder ar bobl-mañ, nag ouz he fallagriez, nag ouz he fehed :

28. Gand aon na lavarfe tud ar vro euz pehini eh-eus on tennet : Ne helle ket an Aotrou o lakaad da vond en douar en-doa lavaret e roje dezo, hag eñ en-doa kas outo : rag se en-deus o zennet er-mêz, evid o laza en distro.

29. Koulskoude da bobl int²⁰⁴ ha da zegouez, hag i eo eh-eus tennet er-mêz gand da nerz braz ha gand da vreh astennet.

X. Pennad.

Eil taolenn al lezenn. Petra a houlen an Aotrou digand bugale Izrael.

1. En amzer-ze e lavaras an Aotrou din : Kompez²⁰⁵ dit diou daolenn vên, evel ma oa ar re genta, ha pign etrezeg ennon war ar menez : hag e ri eun arh koad ;

2. Hag e skrivin war an taolennou ar geriou a oa war ar re eh-eus torret kent, hag e likii anezo en arh.

3. Ober a ris eun arh gand koad setim ; ha goude m'am-boa kompezet diou daolenn vên evel ar re genta, e pignis war ar menez, o terhel anezo em daouarn.

4. Hag eñ a skrivas war an taolennou an deg gourhemenn en-doa lavaret an Aotrou deoh war ar menez, euz a-greiz an tan, pa oa dastumet ar bobl : hag eñ o roas din.

5. Neuze e tistrois hag e tiskennnis diwar ar menez, hag e lakiis an taolennou en arh em-boa greet, hag int chomet eno beteg bremañ, evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet din.

6. Hogen bugale Izrael a zavas o hamp euz a Verot a oa da vugale Jakan, hag ez ejont da Vosera, e peleh eo maro Aaron hag eo bet beziet, ha ma oa lakaet Eleazar, e vab, da veleg-braz en e leh.

7. Ahano e teujont da Hadgad ; hag o veza eet kuit euz al leh-se, e stegnjont o hamp, e Jetebata, douar a zoureier hag a froudou.

8. En amzer-ze an Aotrou a rannas breuriez Levit, evid ma tougje arh kevredigez an Aotrou, ma savje dirazañ en e harg, ha ma vennigje en e ano, beteg-henn.

9. Rag-se Levit n'en-doa ket a lodenn, nag a zegouez gand e vreudeur ; o veza ma oa an Aotrou e-unan e zegouez, evel m'en-doa an Aotrou da Zoue lavaret dezañ.

²⁰⁴ int : eo ; da dud int.

²⁰⁵ Kompez : Gra

10. Hogen me a chomas war ar menez, evel kent, daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez : hag an Aotrou a zelaouas c'hoaz ouzin ar wech-se, ha ne fellas ket dezañ da goll.

11. Hag eñ a lavaras din : kee ha kerz a-raog ar bobl, evid ma'z ay e-barz, ha ma perhenno an douar em-eus touet d'o zadou e rojen dezo.

12. Ha bremañ, Izrael, petra a houlenn an Aotrou da Zoue diganez, nemed ma touji an Aotrou da Zoue, ma kerzi en e heñchou, ma kari anezañ, ma serviji an Aotrou da Zoue a-greiz da galon hag a-greiz da ene ;

13. Ha ma viri gourhemennou an Aotrou, hag e lidou a gemennan hirio dit, evid ma teuy da vad dit ?

14. Setu an neñv, ha neñv an neñvou, an douar ha kement a zo ennañ, a zo d'an Aotrou da Zoue :

15. Ha koulskoude an Aotrou a zo en em unanet gand da dadou, en-deus o haret, ha dilennet o gouenn o-goude, da lavaroud eo, c'hwi, euz a-greiz an oll vroadou, evel ma eo anad hirio.

16. Trodrohit eta pod-mezenn ho kalon, ha na galedit mui ho penn :

17. Rag an Aotrou ho Toue eo hemañ Doue an doueed, hag Aotrou an Aotrounez, Doue braz, galloudeg ha kreñv-murbed, pehini n'en-deus azaouez nag evid an den, nag evid ar gopr.

18. Barna a ra gand reizded an emzivad hag an intañvez : karoud a ra an ergerzer, hag e ro dezañ ar boued hag ar gwisk.

19. Ha c'hwi ivez karit eta an ergezerien ; rag diavêzidi oh bet hoh-unan e douar an Ejipt.

20. An Aotrou da Zoue a zouji, ha ne zerviji nemetañ : en em unani a ri gantañ, hag e toui dre e ano.

21. Eñ eo da veuleudi, ha da Zoue, pehini en-deus greet dit an traou braz ha spontuz-se, o-deus gwelet da zaoulagad.

22. Deg den ha tri-ugent e oa da dadou pa ziskennjont d'an Ejipt : ha setu bremañ en-deus da lakaet an Aotrou da Zoue da veza ker stank ha stered an neñv.

XI. Pennad.

Bennoz war ar re a viro kelennou an Aotrou, ha malloz war ar re o zorro.

1. Kar eta an Aotrou da Zoue, ha mir e peb amzer e gelenno, hag e lidou, hag e varnedigeziou, hag e hourhemennou.

2. Anavezit hirio ar pezh na oar ket ho pugale, pere n'o-deus ket gwelet kastiz an Aotrou ho Toue, e oberou braz, hag e zorn kreñv, hag e vreh astennet.

3. An arouezioù hag an oberioù en-deus greet e-kreiz an Ejipt war ar roue Faraon, ha war e oll zouar,

4. Ha war oll arme an Ejiptianed, ha war o hezeg, ha war o hirri : e pe zoare doureier ar mor Ruz a holoas anezo, pa'z eent war ho lerh, hag an Aotrou a vevezas anezo beteg-henn :

5. Ha petra en-deus greet en ho keñver en distro, ken na oh deuet el leh-mañ ;

6. Hag e-keñver Datan hag Abiron, mibien Eliab, a oa mab da Ruben : penaoz an douar o tigeri e henou a lonkas anezo, gand o ziez, hag o zeltou, ha kement tra a oa dezo e-kreiz Izrael.

7. Ho taoulagad o-deus gwelet an oll oberioù braz en-deus greet an Aotrou,

8. Evid ma virot e oll gelenno a hourhemennan hirio deoh, ha ma hellot mond e-barz, ha kaoud en ho kerz an douar e pehini ez it ;

9. Ha ma vevot pell amzer en douar e pehini e tiver al lêz hag ar mel, hag en-deus lavaret an Aotrou gand le e roje d'ho tadou ha d'o gouenn.

10. Rag an douar e pehini ez it evid e berhenna, n'eo ket evel douar an Ejipt a behini oh deuet er-mêz, e peleh goude beza taolet an had, e tegaser dour evid e hlebia, evel ma reer el liorzou :

11. Hogen eun douar menezieg ha kompezenneg eo, pehini a hortoz glao an neñv ;

12. Eun douar, a zell outañ bepred an Aotrou da Zoue, ha war pehini ema e zaoulagad adaleg derou ar bloaz beteg an diwez.

13. Mar sentit eta ouz va helennou a hourhemennan deoh hirio, da garoud an Aotrou ho Toue, ha d'e zervija a-greiz ho kalon, hag a-greiz hoh ene ;

14. E roy glao d'ho touar en e amzer, abred ha diwezd, evid ma tastumot ed, ha gwin, hag eoul,

15. Ha foenn euz ho parkou evid boueta ho loened ; ha peadra d'en em voueta ha da gaoud ho kwalh hoh-unan.

16. Likit evez na zeuje ho kalon da veza touellet, ha na bellafeh dioh an Aotrou, ha na zervijfeh doueed a-ziavêz, ha na azeulfeh anezo ;

17. Ha na zeujfe an Aotrou da zevel droug ennañ, da zerra an neñv, ha da viroud ouz ar glao na gouezje, hag ouz an douar na roje e frouez, ha na vijeh buan bevezet diwar an douar mad-meurbed ez a an Aotrou da rei deoh.

18. Likiit ar geriou-mañ din en ho kalonou, hag en ho speredou, ha skourrit o da arouez en ho taouarn, ha likit o etre ho taoulagad.

19. Deskit o d'ho pugale evid m'o-devezo koun anezo ; ha pa vezi azezet en da di, ha pa gerzi en hent, ha pa gouski, ha pa zavi,

20. O skriva a ri war dreuzou ha war dor da di ;

21. Evid ma paoto da zeiziou, ha deiziou da vugale, en douar en-deus touet an Aotrou e roje deoh keit ha ma vezo an neñv a-zioh d'an douar.

22. Rag mar mirit ar helennou a hourhemennan deoh, ha ma sevenit anezo ; mar karit an Aotrou ho Toue, ha mar kerzit en e oll heñchou, oh en em unani gantañ ;

23. An Aotrou a vevezo an oll vroadou-ze a-zirazoh ; ha c'hwi a berhenno o bro, petra bennag ma'z int brasoh e niver ha kreñvoh egedoh.

24. Kement leh en-devezo moustret ho troad, a vezo deoh, adaleg an distro, hag al Liban, hag ar ster vraz a Euftrat beteg mor ar huz-heol, e vezo hoh harzou.

25. Hini ebed ne chomo en e zav dirazoh. An Aotrou ho Toue a roy an euz hag ar spont ahanoh war an oll zouar a dleit da voustra, evel ma en-deus e lavaret deoh.

26. Setu e lakaan hirio dirazoh ar vennoz hag ar valloz ;

27. Ar vennoz, mar sentit ouz kelennou an Aotrou ho Toue a hourhemennan hirio :

28. Ar valloz, mar ne zentit ket ouz kelennou an Aotrou ho Toue ; hogen mar pellait dioh an hent a ziskouezan deoh bremañ evid kerzoud war-lerh doueed a-ziavêz, ha na anavezit ket.

29. Hogen pa en-devezo an Aotrou da Zoue da lakaet da vond en douar e pehini ez ez da chom, e likii ar vennoz war menez Garizim, hag ar valloz war menez Hebal,

30. Pere a zo en tu all d'ar Jourdan e-kichenn an hent a zo troet war-zu ar huz-heol, e douar ar Gananneed, pere a chom er hompezennou rag-eneb da Halgala, tost da eun draonienn en em led hag a ya pell.

31. Rag c'hwi a dreuzo ar Jourdan, evid perhenna an douar a dle an Aotrou ho Toue da rei deoh, evid ma ho-pezo ha ma perhennot anezañ.

32. Gwelit eta ma sevenot al lidou hag ar bardedigeziou a likiin hirio dirazoh.

XII. Pennad.

*Gourhemennet eo d'an Izraelited diskara ha brevi an idolou,
paea an deogou hag ar previdi.*

1. Setu amañ al lezennou hag ar gourhemennou a dleit da viroud en douar a dle an Aotrou, Doue ho tadou da rei deoh, evid ma vezoh perhenn dezañ e-pad an oll zeizio ma vezoh beo war an douar.
2. Diskarit an oll lehiou e pere euz a bere e viot deuet da berhenn, o-deus azeulet o doueed war ar menezioù uhel, ha war ar hrehioù, ha dindan ar hoajou stank.
3. Freuzit o aoterioù, ha torrit o skeudennou, ha loskit gand an tan o hoajou-sakr, ha brevit o idolou, ha lamit o anoioù euz al lehiou-ze.
4. Ne reot ket evel-se e-keñver an Aotrou ho Toue :
5. Hogen dond a reot el leh en-devezo dilennet an Aotrou ho Toue euz a-greiz hoh oll vreuriezoù, evid ma lakay e ano, ha ma chomot eno :
6. Hag e kinnigot el leh-se ho sakrifisou-losk, hag ho viktimou, an deogou, hag ar previdi euz ho taouarn, hag ho kouestlou, hag ho roou, hag ar re genta-ganet euz hoh ejenned hag euz ho teñved.
7. Hag e tebrot eno dirag an Aotrou ho Toue : hag en em laouennaot, c'hwi hag ho tiez, gand kement tra e pehini ho-pezo lakaet ho torn, hag a vezo benniget gand an Aotrou ho Toue.
8. Ne reot ket eno evel ma reom amañ hirio, pep hini evel ma kav reiz.
9. Rag bete vremañ n'oh ket deuet en ehan, nag en degouez a dle an Aotrou ho Toue da rei deoh.
10. Ar Jourdan a dreuzot, hag e chomot en douar a dle an Aotrou ho Toue da rei deoh, evid ma viot en ehan a-eneb an oll enebourien tro-war-dro ; ha ma chomot heb aon,
11. El leh en-devezo dilennet an Aotrou ho Toue, evid ma vezo e ano ennañ : eno eo e tegasot kemend a hourhemennou deoh, ha sakrifisou-losk, hag hoh ostivou, hag ho teogou, ha previdi ho taouarn ; ha kement tra a vezo ar gwella er roou a ouestlot d'an Aotrou.
12. Eno e reot banvez dirag an Aotrou ho Toue, c'hwi, ho mibien hag ho merhed, ho mevellou hag ho mitizien, hag al Levited a chomo en ho kêrioù ; rag n'o-deus ket a lod all, nag a zegouez all en ho touez.
13. Laka evez na ginnigfes da zakrifisou-losk e peb leh ma weli.
14. Hogen el leh m'en-devezo dilennet an Aotrou, en unan euz da vreuriezoù, eno e kinnigi da ostivou, hag e ri kement a hourhemennan dit.
15. Hogen mar fell dit debri, ha ma karez debri kig, laz ha debr hervez bennoz an Aotrou da Zoue en-deus roet dit en da gêrioù ; daoust pe e vezo dihlan, da lavaroud eo, nammet pe manahet ; daoust pe e vezo glan, da lavaroud eo, klok ha dinamm, evel ma heller e ginniga : debr evel pa ve yourh pe karo ;
16. Heb debri hepken ar gwad, a skuilli war an douar evel dour.
17. Ne helli ket debri en da gêrioù deog da ed, na da win, na da eoul, nag ar re genta-ganet euz an ejenned hag euz an deñved, na kement az-pezo gouestlet, na kement a fello dit da ginnig a-youl, na previdiou da zaouarn ;
18. Hogen debri a ri anezo dirag an Aotrou da Zoue, el leh en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue, te, da vab ha da verh, da vevel ha da vatez, hag al Levited a chom en da gêrioù : hag en em laouennai, hag en em vagi dirag an Aotrou da Zoue gand kement tra war pehini eh astenni da zorn.
19. Laka evez na zilezi ket al Levited, keit ha ma vezi war an douar.
20. Pa en-devezo an Aotrou da Zoue astennet da harzou, evel ma en-deus e lavaret dit, mar fell dit debri kig diou da hoant ;

21. Mar dema pell al leh m'en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue, evid ma vezo e ano eno, e lazi euz an ejenned hag euz an deñved az-pezo, evel ma em-eus e hourhemennet dit, hag e tebri en da gêriou evel ma kiri.

22. Evel ma tebri yourh pe karo, evel-se e tebri anezo : hag an den glan hag an den dihlan a zebro anezo heb kemm.

23. Laka evez hepken na zebri ket ar gwad : rag ar gwad a zo hoh ene ; ha rag-se ne dleez debri an ene gand ar hig :

24. Hogen skuilla a ri ar gwad-se war an douar evel dour ;

25. Evid ma vezo vad dit ha d'az mibien da houde, pa'z-pezo greet ar pez a zo hetuz dirag an Aotrou.

26. E-keñver an traou az-pezo santellaet ha gouestlet d'an Aotrou, e kemeri anezo, hag e teui d'al leh en-devezo dilennet an Aotrou ;

27. Hag e kinnigi e boued-kinnig ar hig hag ar gwad war aoter an Aotrou da Zoue : gwad an ostivou a skuilli ouz an aoter, hag ar hig a zebri da-unan.

28. Mir ha selaou kement a hourhemennan dit, evid ma vezo vad dit ha d'az mibien da houde da viken, pa'z-pezo greet ar pez a zo mad hag hetuz dirag an Aotrou da Zoue.

29. Pa en-devezo an Aotrou da Zoue bevezet dirazout ar broadou e bro pere ez i da berhenn ; pa'z-pezo he flaouet, hag e chomi en o douar ;

30. Laka evez na heuillfes ar broadou-ze, goude ma vezint bet bevezet dirazout, ha na enklaskfes o lidou, o lavaroud : Evel ma o-deus kaelet ar broadou-ze o doueed,, evel-se e kaelin ivez.

31. Ne ri ket en doare-ze d'an Aotrou da Zoue. Rag i o-deus greet d'o doueed an oll fallagriezou a gasa an Aotrou, o kinniga dezo o mibien hag o merhed, hag oh o leski en tan.

32. Gra hepken e-keñver an Aotrou ar pez a hourhemennan dit : na laka netra ohpenn, ha na denn netra.

XIII. Pennad.

A-eneb ar re a fellfe dezo dougen ar bobl da wall-ober.

1. Mar sav en da douez eur profed, pe eur re hag a lavaro penaoz en-deus bet eur weledigez e huñvre ha mar tiougan eun arouez pe eur burzud bennag :

2. Ha mar deu da hoarvezoud ar pez en-deus lavaret ; ha ma lavar-eñ dit : Deom, hag heuillom doueed a-ziavêz ha na anavezez ket, ha servijom anezo.

3. Ne zelaoui ket geriou ar profeded-se pe an huñvreer-ze ; rag an Aotrou ho Toue a arnod ahanoh, evid ma vezo anad mar karit anezañ a-greiz ho kalon, hag a-greiz hoh ene, pe ma n'her harit ket.

4. Heuillit an Aotrou ho Toue, ha doujit eñ, ha mirit e hourhemennou, ha selaouit e vouez : servijit anezañ hag en em stagit outañ.

5. Hogen ra vezo lazet ar profed-se, pe an huñvreer-ze ; rag komzet en-deus evid ho tistrei diogh an Aotrou ho Toue, pehini en-deus ho tennet euz a zouar an Ejipt, hag ho tasprenet euz a vro ar sklaverez ; hag evid da lakaad da fazia diwar an hent en-deus an Aotrou da Zoue gourhemennet dit : hag evel-se e tenni an droug euz da douez.

6. Mar fell d'az preur, mab da vamm, pe d'az mab, pe d'az merh, pe d'az kwreg a zougez en da galon, pe d'az mignon a gazez evel da ene, da gendrehi, o lavaroud e kuzul : Deom, ha servijom doueed a-ziavêz ha na anavezez ket, te na da dadou,

7. Doueed an oll vroadou a zo en-dro deom, pe a-dost pe a-bell, euz an eil penn d'ar penn all euz an douar ;

8. Na ro ket da hrad-vad dezañ, ha na zelaou ket anezañ ; na espernet ket da lagad anezañ ; n'az-pezh ket a druez outañ, ha na guz ket anezañ :
9. Hogen e laza a ri raktal : ra gouezo da zorn da genta warnezañ, ha goude-ze ra lakay an oll bobl he dorn warnezañ.
10. Ra vezo lazetañ o teurel mein outañ ; o veza ma eo fellet dezañ da bellaad diouh an Aotrou da Zoue, pehini en-deus da dennet euz a zouar an Ejipt, euz a vro ar sklaverez :
11. Evid, pa glevo Izrael oll, ma en-devezo aon, ha na ray den mui netra heñvel ouz kement-se.
12. Mar klevet en unan euz ar hêriou en-deus roet dit an Aotrou da Zoue evid chom enno, eur re bennag o lavaroud :
13. Mibien da Velial a zo eet er-mêz euz ho touez, hag o-deus gwallet tud o hêr, o lavaroud dezo : Deom, ha servijom doueed a-ziavêz ha na anavezit ket :
14. Klask gand evez ha gand hast mar deo gwir an dra-ze ; ha mar kavez penaoz eo gwir ar pezh a zo bet lavaret, ha penaoz eo bet greet ar fallagriez-se ;
15. Raktal e lazi gand ar hleze oll dud ar gêr-ze, hag e vevezi anezi ; ha kement a zo enni, beteg al loened.
16. Dastumi a ri ivez e-kreiz he leuriou-kêr an oll arrebeuri a vezo enni, hag e loski anezo gand ar gêr, en heveleb doare m'o devi oll d'an Aotrou da Zoue, ma vezo hi eur bez peurbaduz, ha na vezo mui savet.
17. Ha na chomo stag netra euz an dra villiget-se ouz da zorn ; evid ma tistroy an Aotrou buanegez e froudenn, ha ma en-devezo truez ouzit, ha ma paoto ahanout, evel ma en-deus e douet d'az tadou,
18. Keit ha ma selaoui mouez an Aotrou da Zoue, ha ma viri e oll gelennoù, a hourhemennan dit hirio evid ma ri ar pezh a zo hetuz dirag an Aotrou da Zoue.

XIV. Pennad.

Loened glan ha dihlan. Deogou ha banveziou dirag an Aotrou.

1. Bezit bugale d'an Aotrou ho Toue : na rit ket a drohiou ennoh, ha n'en em douzit ket en abeg da eun den maro ;
2. O veza ma'z out eur bobl santel d'an Aotrou da Zoue, ha ma en-deus da zilennet evid ma vezi eur bobl a-du dezañ e-unan, e-kreiz an oll boblou a zo war an douar.
3. Ne zebrit ket euz ar pezh a zo dihlan.
4. Setu an anevaled a dleot da zebri : an ejenn, an dañvad, hag ar havr.
5. Ar haro, hag ar yourh, hag ar bual, hag ar bouh-karo, hag ar bizourh, hag an oriks²⁰⁶, hag ar jiraf²⁰⁷.
6. Kement loen a zo faoutet e garn, hag a zaskir, euz hennez e tebrot.
7. Hogen euz ar re a zaskir, ha n'eo ket faoutet o harn, ne dleit ket da zebri, evel ar hañval, hag ar had, hag ar honikl : ar re-ze a vezo dihlan deoh, rag petra bennag ma taskiriont, n'eo ket faoutet o harn.
8. An hoh ivez a vezo dihlan, o veza ma eo faoutet e garn, ne zaskir ket. Ne zebrit ket euz a gig ar re-mañ, ha ne lakait ket ho torn war o gannou.
9. Setu ar re a zebrit euz ar re oll a vev en doueier : euz ar re o-deus brenkou ha stankennoù e tebrot.
10. Euz ar re n'o-deus na brenkou na stankennoù, ne zebrit let ; rag dihlan int.
11. Debrit eta an oll evned glan.

²⁰⁶ oriks : ? Marteze "kaor ouez".

²⁰⁷ jiraf : galleg.

12. Na zebrit ket euz ar re zihlan : da lavaroud eo, euz an erer, euz ar grifon, euz ar falhun,
13. Euz an iksion²⁰⁸, hag euz ar skoul, hag euz ar gup hervez e ouenn :
14. Hag euz a beb rumm brini,
15. Hag euz an otruz²⁰⁹, hag euz ar gaouenn, hag euz an dour-yar, hag euz ar sparfell diogh e ouenn :
16. Hag an herlegon, hag ar sin, hag an ibis ;
17. Hag ar morvran, hag ar begerez²¹⁰, hag ar vran-noz²¹¹ ;
18. Hag ar bongorz, hag ar heveleg-mor, pep hini e e ouenn ; hag ivez an hoperig²¹², hag al logodenn-zall.
19. Kement a stlej, hag a zo askelleg, a vezo dihlan, ha ne vezo ket debret anezañ.
20. Kement a zo glan, debrit anezañ.
21. Hogen ne zebrot netra a gement a vezo maro anezañ e-unan : ro hen da zebri, pe gwerz hen d'an diavêziad a vezo en diabarz d'az perzier ; rag te a zo pobl santel an Aotrou da Zoue. Ne boazi ket ar menn-gavr a zen e vamm.
22. Lakaad a ri a-du pep bloaz an degved lodenn euz da oll frouez a zav en douar ;
23. Hag e tebri euz anezo dirag an Aotrou da Zoue, el leh en-devezo dilennet evid ma vezo galvet e ano eno, an deog euz da ed, hag euz da win, hag euz da eoul, hag ar re genta-ganet euz da zaout hag euz da zeñved ; evid ma teski douja an Aotrou da Zoue e peb amzer.
24. Hogen pa vezo re hir an hent, ha re bell al leh en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue ; pa en-devezo da venniget, ha ne helli ket o degas oll dezañ,
25. O gwerzi oll evid arhant, a zougi en da zorn, hag ez i d'al leh en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue :
26. Hag e preni gand an arhant-se ar pez a giri, pe saout, pe deñved, hag ivez gwin ha bier, ha kement a hoantay da galon, hag e tebri dirag an Aotrou da Zoue, hag e ri banevz, te ha da di²¹³,
27. Hag al Levit a zo en diabarz d'az perzier : laka evez na zilezjes anezañ, rag n'en-deus lod all ebed en da zegouez.
28. En trede bloaz e ranni eun deog all euz a gement a vezo savet dit en amzer-ze : hag hel liki a-du en da diez :
29. Hag al Levit pehini n'en-deus lod all nemed en da zegouez, hag an diavêziad, hag an emzivad, hag an intañvez, pere a zo en diabarz d'az perzier, a zeuio, hag a zebro o gwalh ; evid m'az pennigo an Aotrou da Zoue e kement labour a ri gand da zaouarn.

XV. Pennad.

Lezennou ar seizved bloaz. An aluzenn. Kinniga a ra re genta-ganet d'an Aotrou.

1. Er seizved bloaz e ri an distaol,
2. A vezo greet evel-henn. Neb a vezo dleet dezañ eun dra bennag gand e vignon, pe gand e nesa hag e vreur, ne hello ket e houlenn, o veza ma eo bloaz distaol an Aotrou.

²⁰⁸ iksion : ? Marteze "erer-mor".

²⁰⁹ otruz : struzkañval.

²¹⁰ ar begerez : ar pilikant.

²¹¹ ar vran-noz : ? Marteze "ar pohan".

²¹² hoperig : an hoper-noz.

²¹³ da di : galleg. "da diad".

3. E houlenn a helli digand an ergerzer hag an diavêziad : hogen n'az-pezo ket ar galloud d'e houlenn digand da genvroad na da gar-nes.
4. Ha ne vezo nag ezommeg na paour en ho touez : evid ma'z pennigo an Aotrou da Zoue en douar a dle da rei dit e kerz.
5. Mar selaouez koulskoude mouez an Aotrou da Zoue, ha ma virez kement en-deus gourhemennet dit, hag a gemennan dit hirio, e vennigo ahanout, evel ma en-deus e lavaret.
6. Presta ri da galz a vroadou, ha ne ampresti digand hini. Aotrounia a ri war galz a boblou, ha ne vezi aotrouniet gand hini.
7. Pa vezi eet en douar a dle an Aotrou da Zoue da rei dit, mar kouez e paourentez unan euz da vreudeur a chomo en diabarz da berzier da gêr, ne galedi ket da galon, ha ne zerri ket da zorn ;
8. Hogen e zigeri a ri d'ar paour, hag e roi dezañ e prest ar pez a weli en-devezo ezomm.
9. Laka evez na zavje ennout eur gwall mennoz, ha na lavarfes en da galon : Tostaad a ra ar seizved bloaz, bloaz an distaol ; ha na zistrojes da zaoulagad diwar da vreur paour, o veza na fell ket dit presti dezañ ar pez a houlenn : gand aon na harmfe ouzit etrezeg an Aotrou, ha na zeuje kement-se da behed dit.
10. Hogen rei a ri dezañ : ha ne ri troidell ebed evid e frealzi en e ezommou, evid ma vezi benniget gand an Aotrou da Zoue e peb amzer, hag e kement tra a ri.
11. Peorien a vezo bepred er vro e pehini e chomi, rag se e hourhmenann dit digeri da zorn d'az preur ezommeg ha paour, hag a chom ganez en da vro.
12. Pa vezo bet gwerzet dit da vreur pe da hoar hebread, ha ma en-devezo da zervijet²¹⁴ e-pad c'hweh vloaz, e kasi anezañ dieub er seizved bloaz.
13. Ha ne lezi ket da vond kuit, e zaouarn goullou, an hini a zieubi :
14. Hogen rei a ri dezañ da voued-hent eun dra bennag euz da dropellou, euz da leur, euz da waskell, war bere en-devezo an Aotrou da Zoue skuillet e vennoz.
15. Az-pezh koun penaoz out bet sklav da-unan e douar an Ejipt, pa penaoz an Aotrou da Zoue en-deus da zieubet : ha rag-se e hourhemennan an dra-mañ dit hirio.
16. Hogen ma lavar : Ne fell ket dit mond kuit ; o veza ma kar ahanout ha da di, ha ma en em gav ervad ganez ;
17. E kemerit eur minaoed, hag e toulli e skouarn ouz dor da di, hag eñ a vezo da sklav dit da viken. An heveleb tra a ri d'az matez.
18. Na zistro ket da zaoualgad diouto, pa'z-pezo o haset dieub, dre m'o-deus da zervijet e-pad c'hweh vloaz evid gopr eur gopr-devezour : evid ma'z pennigo an Aotrou da Zoue e kement a ri.
19. Kement kenta-ganet e-touez ar bared a zeuy en da zaout pe en da zeñved, a ouestli d'an Aotrou da Zoue. Ne labouri ket gand an ejenn kenta-ganet, ha ne douzi ket an dañvad kenta-ganet.
20. O debri a ri beb bloaz dirag an Aotrou, el leh en-devezo dibabet an Aotrou, te ha da di²¹⁵.
21. Hogen ma en-deus eun namm bennag, pe mar deo kamm pe zall, pe displeber pe wan en eul leh bennag euz e gorr, ne vezo ket lazet d'an Aotrou da Zoue.
22. Hogen e zebri a ri en diabarz euz a berzier da gêr : an hini glan kerkoulz hag an hini dihlan a zebro anezo, evel euz a yourh pe euz a garo.
23. Lakaad a ri evez hepken na zebri ket o gwad ; hogen d'an douar e skuilli anezañ evel dour.

²¹⁴ ma en-devezo da zervijet : e skrid Gonideg n'eus kaoz nemed euz ar breur. Netra digand ar hoar.

²¹⁵ da di : da diad.

XVI. Pennad.

Goueliou Pask, ar Pantekost hag an Tabernaklou.

1. Mir miz ar frouez nevez da zerou an nevez-amzer ; evid ober ar Pask d'an Aotrou da Zoue ; o veza ma eo er miz-se en-deus an Aotrou da Zoue da dennet euz an Ejipt a-hed an noz.

2. Hag e lazi ar Pask d'an Aotrou da Zoue, euz a zeñved, hag euz a ejenned, el leh en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue, evid ma chomo e ano eno.

3. Ne zebri ennañ bara goell : e-pad seiz devez e tebri bara dihoell, bara gloaz, o veza ma out deuet er-mêz euz an Ejipt er spont ; evid ma ez-pezo koun euz da zonedigez er-mêz euz an Ejipt, e-pad an oll zeziou euz da vuhez.

4. Ne vezo ket a hoell en da oll harzou e-pad seiz devez, ha ne chomo ket a gig euz al loen a vezo bet lazet war ar pardaez euz ar henta deiz beteg ar mintin.

5. Ne helli ket laza ar Pask e kement hini euz da gêriou a dle an Aotrou da Zoue da rei dit ;

6. Hogen el leh en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue, evid ma chomo e ano eno : laza a ri ar Pask war ar pardaez pa guzo an heol, er pred ma out deuet er-mêz euz an Ejipt.

7. E boaza a ri, hag e tebri anezañ el leh en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue, hag o sevel ouz ar mintin, ez i d'an teltou.

8. E-pad c'hweh devez e tebri bara dihoell ; hag er seizved deiz, o veza ma eo strollad an Aotrou da Zoue, ne labouri ket.

9. Seiz sizun a niveri adaleg an deiz e pehini ez-pezo lakaet ar falz en edou ;

10. Hag e lidi gouel ar sizuniou d'an Aotrou da Zoue ; ar ro youleg euz da zorn a ginnigi hervez bennoz an Aotrou da Zoue :

11. Hag e ri banvez dirag an Aotrou da Zoue ; te, da vab ha da verh, da vevel ha da vatez, hag al Levit a zo en diabarz euz da berzier, hag an diavêziad, hag an emzivad, hag an intañvez, a chom ganeoh, el leh en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue, evid ma chomo e ano eno.

12. Hag ez-pezo koun penaoz out bet sklav en Ejipt ; hag e viri hag e ri ar pez a zo bet gourhemennet.

13. Lida a ri ivez gouel an tabernakl e-pad seiz devez, pa zastumi da frouez diwar al leur, hag a-zindan ar waskell :

14. Hag e ri banvez en da ouel, te, da vab ha da verh, da vevel ha da vatez ; hag al Levit, hag an diavêziad, hag an emzivad, hag an intañvez, a zo en dibarz euz da berzier.

15. Lida a ri ar gouel-ze e-pad seiz devez d'an Aotrou da Zoue, el leh en-devezo dilennet an Aotrou ; hag an Aotrou da Zoue az pennigo en da frouezou²¹⁶, hag e oll oberiou da zaouarn ; hag e vezi el levenez.

16. Teir gwech e-pad ar bloaz en em ziskouezo an oll baotred dirag an Aotrou da Zoue el leh en-devezo dilennet : da ouel ar bara dihoell, da ouel ar sizuniou, ha da ouel an tabernaklou. N'en em ziskouezint ket dirag an Aotrou goullo o daouarn.

17. Hogen pep hini a ginnigo dioh ma en-devezo, hervez ar mennoz en-devezo roet dezañ an Aotrou e Zoue.

18. Lakaad a ri barnerien ha blenerien ouz doriou da oll gêriou en-devezo roet dit an Aotrou da Zoue, dre beb breuriez, evid ma varnint ar bobl gand eur varn reiz,

²¹⁶ frouezou : daou liester (!).

19. Ha ne droint a du ebed. N'az-pezo azaouez ebed evid den, ha ne zegemeri ket a rouu ; rag ar rouu a zall daoulagad ar re fur, hag a laka da drei geriou ar re wirion.

20. Gand gwirionez e heuilli kement a zo gwirion, evid ma vevi ha ma piaoui an douar en-devezo roet dit an Aotrou da Zoue.

21. Ne blanti ket a goad braz, na gwezenn ebed e-tal aoter an Aotrou da Zoue.

22. Ne ri ket ha ne zavi ket evidout a skeudenn : rag an Aotrou da Zoue en-deus kas outo.

XVII. Pennad.

E tleer kemeroud ali ar veleien. Dleadou ar roueed.

1. Ne lazi ket d'an Aotrou da Zoue eun dañvad pe eun ejenn, war pehini e vezo eun namm pe eur gwall bennag ; rag eun dra argaruz eo d'an Aotrou da Zoue.

2. Pa vezo kavet en da douez, en unan euz ar hêriou en-devezo roet dit an Aotrou da Zoue, eur gwaz pe eur vaouez a ra droug dirag an Aotrou da Zoue, hag a dorr e gevredigez,

3. O vond da zervija doueed a-ziavêz, hag oh azeuli anezo, an heol, pe al loar, pe oll stered an neñv, ar pezh n'em-eus ket gourhemennet :

4. Ha pa vezo disklêriet dit kement-se, ha goude beza e glevet ma'z-pezo greet eun enklask piz, ha ma'z-pezo anavezet penaoz eo gwir, ha penaoz eo bet greet ar fallagriez-se en Izrael ;

5. E kasi ar gwaz pe ar vaouez o-devezo greet ar fallagriez-se ouz perzier da gêr. Ne vezo lazet den war testeni unan hepken.

6. Neb a vezo lakaet d'ar maro, a vezo barnet war lavar daou pe dri dest. Ne vezo lazet den war testeni unan hepken.

7. Dorn an testou a skoy gantañ da genta evid e laza, ha dorn ar re all euz ar bobl a skoy goude, evid ma tenni an droug euz da greiz.

8. Mar gwelez penaoz eo diêz ha reustlet evidout ar varn etre ar gwad hag ar gwad, etre eun abeg hag eun abeg, etre eul lovr hag eul lovr : ha mar gwelez penaoz e kildro geriou ar varnerien e-tal da berzier, sav, ha pign d'al leh en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue.

9. Hag e teui da gavoud ar veleien euz a ouenn Levit, hag ar barner a vezo e karg en amzer-ze : ha te a houlenno kuzul diganto, hag i a zisklêrio dit gwirionez ar varn.

10. Ha te a ray kement o-devezo lavaret ar re a zo da benn al leh en-devezo dilennet an Aotrou, ha kement o-devezo desket dit,

11. Hervez e lezenn ; hag eh heuilli o barnedigez ; ha ne droi nag a-zehou nag a-gleiz.

12. Hogen neb a stambouho, ha na fello ket dezañ senti ouz gourhemenn ar beleg-braz, pehini en amzer-ze a vezo da zservijer d'an Aotrou da Zoue, hag ouz lezenn ar barner, e vezo lakaet d'ar maro an den-ze ; hag e tenni an droug euz a Izrael.

13. Hag an oll bobl o klevoud kement-se he-devezo aon, hag hini anezo ne stambouho pelloh.

14. Pa vezi eet e-barz an douar a dle an Aotrou da Zoue da rei dit ; pa'z-pezo perhennet anezañ, ha pa chomi ennañ, ma leverez : Lakaad a rin eur roue warnon, evel ma o-deus an oll vroadou a zo en-dro din :

15. Lakaad a ri da roue an hini en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue euz a-douez da vreudeur. Ne helli ket kemeroud da roue eun den euz a eur vroad all, ha na vezo ket breur dit.

16. Ha pa vezo lakaet da roue, ne zavo ket evitañ eun niver braz a gezeg, ha ne lakay ket ar bobl da zistrei d'an Ejipt, goude beza savet eur varhegiez vraz : dreist-oll pa en-deus an Aotrou gourhemennet dit na zistrojes biken mui dre an hent-se.

17. N'en-devezo ket eun niver braz a wragez evid likaoui e galon, nag eul lod braz a arhant hag a aour.

18. Hogen goude ma vezo azezet war dron e rouantelez, e lakay skriva evitañ en eul levr deuteronom al lezenn-mañ, hag ar skwer anezañ a vezo roet dezañ gand ar veleien euz a vreuriez Levit,

19. Gantañ e vezo, hag e lenno ennañ e oll zeizioù euz e vuhez, evid ma tesko douja an Aotrou e Zoue, ha miroud e heriou hag e lidou, a zo gourhemennet el lezenn.

20. Na zavet ket e galon gand balhder dreist e vreudeur, ha na droet nag en tu dehou, nag en tu kleiz, evel ma reno pell amzer, eñ hag e vibien, war vugale Izrael.

XVIII. Pennad.

Lodenn ar veleien hag al Levited. Profed vraz diouganet.

1. Ar veleien hag al Levited, hag ar re all pere a zo euz an heveleb breuriez, n'o-devezo ket a lodenn nag a zegouez gand an dilerh euz a Izrael, o veza ma tebrint e sakrifisou, hag e ginnigou.

2. Ha n'o-devezo netra all euz a gerz o breudeur : rag an Aotrou e-unan eo o degouez, evel ma en-deus e lavaret dezo.

3. Setu amañ ar gwir o-devezo ar veleien digand ar bobl, ha digand ar re a ginnig viktimou : daoust pe e lazint eun ejenn, pe eun dañvad, e roint d'ar beleg ar skoaz hag ar poull-kalon :

4. Kenta frouez an ed, ar gwin hag an eoul ; ha lod euz ar gloan pa vezo touzet an deñved.

5. Rag an Aotrou da Zoue en-deus e zilennet a-douez da oll vreuriezou, evid ma savo ha ma servijo ano an Aotrou, eñ hag e vibien da viken.

6. Ma ya kuit eul Levit euz a unan euz da gêriou en Izrael, e pehini e chom, ha ma fell dezañ dond el leh en-devezo dilennet an Aotrou,

7. E servijo e ano an Aotrou e Zoue, evel e oll vreudeur al Levited, a vezo en o zav en amzer-ze dirag an Aotrou.

8. An heveleb lodenn voued en-devezo hag ar re all ; heb niveri al lodenn a vezo dleet dezañ en e gêr e-unan diou degouez e dadou.

9. Pa vezi eet e-barz an douar a roy dit an Aotrou da Zoue, diwall n'az-pe c'hoant da heulia fallagriezou ar broadou-ze ;

10. Ha na ve kavet en da douez unan bennag a hlanje e vab, pe e verh, oh e tremenont dre an tan : pe e houlennfe kaoud kuzul digand an diouganerien, pe a arvestje an huñvreou hag an aroueziou, pe a raje strobinnellou ;

11. Pe a ve kelhier, pe a houlennfe kuzul digand ar re o-deus spered Pitou²¹⁷, pe digand an diouganerien, pe a glaskfe ar wirionez e-touez ar re varo :

12. Rag an Aotrou a argarz an oll draou-ze ; hag en abeg d'ar gwallou-ze e vevezo anezo pa'z i e-barz.

13. Klog e vezi, ha dinamm gand an Aotrou da Zoue.

14. Ar broadou-ze, e douar pere e teui da berhenn, a zelaou an diouganerien : hogen te a zo bet desket en eun doare all gand an Aotrou da Zoue.

²¹⁷ spered Pitou : ?

15. An Aotrou da Zoue a lakay da zevel dit eur profed euz da bobl, hag a-greiz da vreudeur, eveldon, e zelaoui a ri.

16. Evel ma eh-eus goulennet ouz an Aotrou da Zoue e Horeb, pa oa dastumet ar bobl, o lavaroud : Ne glevin mui mouez an Aotrou va Doue, ha ne welin mui an tan braz-meurbed-se, gand aon na varvjen.

17. Hag an Aotrou a lavaras din : Mad eo kement o-deus lavaret.

18. Lakaad a rin da zevel eur Profed dezo euz a-greiz o breudeur, heñvel ouzit : lakaad a rin va geriou en da henou, hag eñ a lavaro dezo kement a hourhemennin dezañ.

19. Hogen piou bennag na fello ket dezañ selaoui e heriou, a lavaro em ano, me eo a vezo ar veñjer.

20. Ar profed pehini, saotret gand ar balhder, a fello dezañ komz em ano, ha lavaroud traou ha n'em-bezo ket gourhemennet dezañ, pe an hini a gomzo e ano an doueed a-ziavêz, a vezo lakaet d'ar maro.

21. Ha ma lavarez ennout da-unan : Penaoz e hellan-me anaoud ar ger, ha n'en-deus ket lavaret an Aotrou !

22. Setu an arouez az-pezo : Ar pezh en-devezo diouganet ar profed-se, ha na vezo let c'hoarvezet, n'en-deus ket lavaret an Aotrou kement-se ; hogen gand stambouh e galon eo en-deus e aozet e gaou ar profed : ha rag-se ne zouji ket anezañ.

XIX. Pennad.

Kêriou a vinihi. Diwar-benn ar fals testou.

1. Pa en-devezo bevezet an Aotrou da Zoue ar broadou, douar pere a dle de rei dit, p'az-pezo e berhennet, ha pa chomi en o hêriou hag en o ziez ;

2. E ranni evidout teir gêr e-kreis an douar a dle an Aotrou da Zoue da rei dit e kerz ;

3. Hag eh aози gand evez eun hent : hag e ranni e teir lodenn gevatal oll vro da zouar, evid ma en-devezo tost dezañ eul leh evid en em denna ennañ, neb a vezo red dezañ tehoud evid beza lazet eun den.

4. Setu amañ al lezenn diwar-benn al lazer a deh kuit, pa vezo red miroud e vuhez dezañ : Neb en-devezo lazet e nesa heb e houzoud ; hag a vezo anad penaoz n'en-doa ket a gas outañ daou pe dri devez kent ;

5. Hogen penaoz hepken e oa gantañ en eur hoad evid troha keuneud, ha penaoz pa edo o troha, e ao eet ar vouhal euz e zorn, hag an houarn o veza dilammet euz e droad en-deus skoet gand e vignon, hag e lazet ; eñ a hello tehi en unan euz ar hêriouze, hag e vevo ;

6. Gand aon na zeuje ar har nesa d'an hini a zo bet skuillet e wad, heget gand e hlahar, da redeg war-lerh hemañ, ha d'e dizoud, mar deo re hir an hent, ha d'e laza, petra bennag n'eo ket e-unan dellezeg a varo, o veza n'eus ket a zoare en-defe bet kent kas ebed ouz an hini a zo bet lazet.

7. Rag-se e hourhemennan dit ranna an teir hêr-ze en eun hed kevatal etrezo.

8. Hogen pa en-devezo an Aotrou da Zoue hedet da harzou, evel ma en-deus e douet d'az tadou, ha ma en-devezo roet dit an oll zouar en-deus lavaret dezo e roje,

9. (Mar mirez koulskoude e gelennou, ha mar grez ar pezh a hourhemennan dit hirio, ma kiri an Aotrou da Zoue, ha ma kerzi en e heñchou e peb amzer) teir gêr all a liki ohpenn, hag evel-se e liki daou gement all an teir gêr genta :

10. Evid na vezo ket skuillet ar gwad dinamm e-kreiz an douar a roy dit an Aotrou da Zoue e kerz, gand aon na zeujes da veza tamalluz a skuill gwad.

11. Hogen mar deu eur re, dre gasoni ouz e nesa, d'e spia evid e laza, mar sav, mar sko gantañ, ha, mar laz anezañ, ha mar teh en unan bennag euz ar hêriou-ze,

12. Henaoured e gêr-eñ a gaso war e lerh, hag a lakay e denna euz al leh a vinihi, a lakay anezañ etre daouarn ar har-nes euz an hini a vezo bet skuillet e wad, hag a vezo lakaet d'ar maro.

13. N'az-pezo ket a druez outañ, hag e tenni torfed ar gwad dinamm euz a Izrael, evid ma vezo vad dit.

14. Ne zilerhi ket harzou da nesa a vezo bet lakaet gand ar re a oa en da raog, ne zizougi ket anezo en da zegouez, a roy dit an Aotrou da Zoue en douar az-pezo e kerz.

15. Ne zavo ket eun test hepken ouz eun den, daoust pe behed pe pe zroug en-devezo greet hemañ ; hogen peb ger a zavo e genou daou pe dri dest.

16. Mar sao eun test gaouiad a-eneb eun den, oh e damalloud a wallerez,

17. E savint o-daou, er striv-se etrezo, dirag an Aotrou, hag e gwel ar veleien hag ar varnerien a vezo e karg en deiziou-ze.

18. Goude beza greet eun enklask piz, mar kavont penaoz an test gaouiad en-deus lavaret eun tamall e gaou a-eneb e vreur ;

19. E raint dezañ er hiz m'en-doa mennet ober d'e vreur, hag e tenni an droug euz da greiz ;

20. Evid pa glevo ar re all kement-se, ma teuint da gaoud aon, ha na gredint mui ober netra er hiz-se.

21. N'az-pezo ket a druez outañ ; hogen lakaad a ri da rei buhez evid buhez, lagad evid lagad, dant evid dant, dorn evid dorn, troad evid troad.

XX. Pennad.

Lezennou diwar-benn ar brezel.

1. Pa'z i d'ar brezel a-eneb da enebourien, hag e weli kezeg ha kirri, hag eun arme brasoh e niver eged da hini, n'az-pet a aon razo ; rag ganez ema an Aotrou da Zoue, pehini en-deus da dennet euz a zouar an Ejipt.

2. Hogen pa dostay an emgann, e savo ar beleg dirag an arme, hag e komzo evel-henn ouz ar bobl :

3. Selaou, Izrael : hirio e tleit en em ganna ouz hoh enebourien ; na vezet ket saouzanet ho kalon, n'ho-pezet ket a aon, na argilit ket, na spontit ket razo ;

4. Rag an Aotrou ho Toue a zo en ho kreiz, hag e stourmo evidoh ouz hoh enebourien, evid ho tenna euz ar gwall.

5. An ofiserien ivez e peb bandenn a lavaro d'an arme a vezo oh o zelaoui : Piou eo an den en-deus savet eun ti nevez, ha n'en-deus ket e ouestlet ? Eet ha distroet d'e di, gand aon na varvje en emgann, ha ma teuje eun all d'e ouestla.

6. Piou eo an den en-deus plantet eur winienn, ha n'en-deus ket c'hoaz he lakaet da veza boutin, evid ma hello an oll debri euz anezi ? Eet, ha distroet d'e di, gand aon na varvje en emgann, ha na zeuje eun all da ober ar pez a dle da ober e-unan.

7. Piou eo an den en-deus roet e her da veza pried da eur wreg, ha n'en-deus ket c'hoaz he hemeret ? Eet, ha distroet d'e di, gand aon na varvje en emgann, ha na zeuje eun all d'he hemeroud.

8. Goude beza lavaret kement-se, e livirint c'hoaz, o komza ouz ar bobl : Piou eo an den aonig ha laosk a galon ? Eet, ha distroet d'e di, gand aon na zeuje da sponta kalonou e vreudeur, evel ma eo saouzanet e-unan gand ar spont.

9. Ha pa vezo tavet ofiserien an arme, ha pa o-devezo ehanet da gomza, pep hini a zastumo e vandennou evid an emgann.

10. Pa dostay ouz eur gêr evid he gronna, e kinnigi dezi ar peoh da genta.
11. Mar degemer anezañ, ha mar digor dit he ferzier, an oll bobl a vezo enni a vezo salvet, hag e servijo ahanout en eur baea ar gwiriou.
12. Hogen ma ne fell ket dezi ober kevredigez ganez, ha mar deraou ober ar brezel ouzit, e hronni anezi.
13. Ha pa en-devezo an Aotrou da Zoue he lakaet etre da zaouarn, e lazi gand ar hleze kement paotr a vezo enni.
14. O viroud ar merhed, hag ar vugale, al loened, ha kement tra all a vezo er gêr. Ranna a ri an oll breiz etre an arme, ha te en em vago gand diwisk da enebourien, en-devezo roet dit an Aotrou da Zoue.
15. Evel-se e ri e-keñver an oll gêriou, a zo pell-braz diouzit, ha pere n'int ket euz ar hêriou-ze, a dleez da gaoud en da gerz.
16. Hogen e-keñver ar hêriou a vezo roet dit, ne lezi beo hini ebed ;
17. Hogen o laza a ri gand ar hleze, da lavaroud eo, an Heteed, hag an Amorreed, hag ar Gananeed, hag ar Ferezeed, hag an Heveed, hag ar Jebuzeed, evel ma en-deus an Aotrou da Zoue gourhemennet dit :
18. Gand aon ne zeskjent deoh ober an oll fallagriezou o-deus greet d'o doueed, ha na behjeh a-eneb an Aotrou ho Toue.
19. Pa hronni eur gêr pell amzer, ha pa zavi kreñvou tro-war-dro, evid he hemeroud, ne drohi ket ar gwez gand pere e helli en em vaga, ha ne wasti ket gand ar bouhilli ar vro tro-war-dro : rag koad eo ; ha n'eo ket tud, ha ne hellfe ket kreski en da eneb an niver euz ar vrezilidi.
20. Ha ma n'eo ket gwez frouez, hogen gwez koadou, ha mad evid an ezommou all ; troh i, ha gra ijinou ganto, ken n'az-pezo kemeret ar gêr a stourm ouzit.

XXI. Pennad.

Laz dianav. Gwir ar re genta-ganet. Mab dizent.

1. Pa vezo bet kavet er vro a dle an Aotrou da Zoue da rei dit, korv maro eun den a vezo bet lazeta, heb gouzoud piou en-devezo e lazeta.
2. An henaoured hag ar varnerien a yelo er-mêz, hag a vento an hed a zo adaleg ar horv maro beteg an oll gêriou tro-war-dro :
3. Hag o veza anavezeta an hini a vezo an dosta, henaoured ar gêr-ze a gemero eun onner euz an tropell, pehini n'he-devezo ket c'hoaz douget ar yeo, ha n'he-devezo ket roget an douar gand ar soh :
4. Hag e kasint anezi en eun draonienn haro ha meined, pehini ne vezo ket bet aret nag hadet biskoaz : hag eno e trohint gouzoug an onner.
5. Hag e tostaya ar veleien, mibien Levit, en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue evid e zervija, hag evid benniga en e ano, ha ma vezo barnet diou o gêr kement striv, ha kement a zo glan pe zihlan.
6. Hag e teuy henaoured ar gêr-ze etrezeg an hini a vezo bet lazeta, hag e walhint o daouarn war an onner a vezo bet lazeta en draonienn.
7. Hag e livirint : On daouarn n'o-deus ket skuillet ar gwad-se, hag on daoulagad n'o-deus ket e welet.
8. Aotrou, bez trugarezuz e-keñver da bobl Izrael eh-eus dasprenet, ha na damall ket ar gwad dinamm d'az pobl Izrael. Ha gwall ar gwad-se a vezo tennet diwarnezo.
9. Ha te a vezo didamall euz ar gwad dinamm a vezo bet skuillet, pa'z-pezo greet ar pez en-deus gourhemennet an Aotrou.

10. Pa vezi eet d'ar brezel a-eneb da enebourien, ma en-deus an Aotrou da Zoue o lakaet etre da zaouarn, ha pa o hasi da sklaved,

11. Mar gwelez e-touez ar sklaved eur vaouez kaer ; mar karez anezi, ha ma c'honataez he haoud da wreg,

12. E liki anezi da vond en da di ; hag hi a douzo he bleo, hag a grenno heh ivinou,

13. Hag a ziwisko ar zae he-doa pa eo bet kemeret : hag oh azeza en da di, e ouelo he zad hag he mamm e-pad eur miz : ha goude-ze ez i d'he havoud, e kouski ganti, hag hi a vezo da wreg.

14. Hogen goude-ze ma ne blij ket dit, he lezi da vond dieub, ha ne helli ket he gwerza evid arhant, nag he maha gand da halloud, o veza ma eh-eus heh izellaet.

15. Ma en-deus eun den diou wreg, unan karet gantañ, hag eben kasaet, ha ma o-deus bet mibien dioutañ, ha mar deo an hena mab²¹⁸ an hini na gar ket ;

16. Pa fello dezañ ranna e vadou etre e vibien, ne hello ket lakaad da henaour mab an hini a gar, hag e lakaad dreist mab an hini a gasa ;

17. Hogen anaoud a ray evid an henaour mab an hini a gasa, hag e roy dezañ diou lodenn euz a gement en-deus : rag hennez eo ar henta euz e vibien, ha dezañ eo eo dleet an henanded.

18. Ma en-deus ganet eun den eur mab kilpenneg ha dicheg, pehini ne zelaou na gourhemenn e dad na gourhemenn e vamm, ha pehini pa vez bet tamallet ganto, a zinah gand fae senti outo :

19. E krogint ennañ, hag e kasint anezañ da henaoured e gêr, e-tal porz ar varn,

20. Hag e livirint dezo : Ar mab-mañ deom a zo kilpenneg ha dicheg ; fae eo gantañ selaoui or helennou ; en em rei a ra d'ar hadelez, d'an orged ha d'ar vezventi.

21. Neuze pobl ar gêr a labezo anezañ gand mein, ken na varvo ; evid ma tennot an droug euz ho kreiz, ha ma vezo spontet Izrael oll pa glevo kement-se.

22. Pa en-devezo eun den greet eun droug a dalv e ve lakaet da vervel ; pa vezo bet barnet d'ar maro ha staget ouz ar groug ;

23. Ne chomo ket e gorv maro ouz ar prenn, hogen en hevelb deiz e vezo beziet : rag an hini a zo krouget ouz ar prenn a zo milliget gand Doue : ha ne zaotri kaet an douar en-deus roet dit an Aotrou da Zoue e kerz.

XXII. Pennad.

Karantez e-keñver an nesa. Kastiz an avoultriez hag ar hadelez.

1. Ne weli ket ejenn da vreur, pe e zañvad diank, ha te o vond e-biou ; hogen o degas a ri d'az preur.

2. Ha pa ne ve ket kar dit da vreur, ha pa ne anavezjes ket anezañ : o has a ri en da di, hag e chomint ganez, ken na glasko da vreur anezo, ha n'en-devezo ket anezo.

3. En heveleb doare e ri e-keñver e azen, hag e-keñver e zillad, hag e-keñver kement tra en-defe kollet da vreur : ma o havez, n'o lez ket da redeg, evel pa ve da eun diavêziad.

4. Mar gwelez azen da vreur pe e ejenn kouezet war an hent, ne zelli ket gand fae outañ, hogen e zevel a ri gantañ.

5. Eur vaouez n'en em wisko ket gand dillad gwaz, hag eur gwaz ne gemero ket dillad maouez ; rag neb her gra a zo argaruz dirag Doue.

²¹⁸ an hena mab : ar mab hena.

6. O valea dre an hent, mar kavez eun neiz laboused, pe en eur wezenn pe war an douar, hag ar vamm kluchet war he labousedigou pe war he viou : ne gemeri ket ar vamm gand he labousedigou.

7. Hogen he lezel a ri da vond kuit, pa'z-pezo kemeret he labousedigou ; evid ma vezo vad dit, ha ma vevi pell amzer.

8. Pa zavi eun ti nevez, e ri eur voger en-dro d'an doenn ; gand aon na ve skuillet ar gwad en da di, ha na ves tamallet, mar kouez eur re d'an traoñ diwarnezañ.

9. Ne hadi ket had all en da winienn ; gand aon na zeuje an had eh-eus hadet hag ar pez a zav euz ar winienn da veza saotret war eun dro.

10. Ne ari ket gand eun ejenn hag eun azen kevred.

11. Ne wiski ket a zillad gweet gand gloan ha lin.

12. Gand kerdinigou e ri pempillou evid lakad e pevar horn ar vantell gand pehini en em holoez.

13. Mar kemer eur re eur wreg, ha mar deu da houde d'he hasaad,

14. Hag o klask abeg evid he has kuit, mar ro dezi eur gwall-ano, o lavaroud : Ar wreg-se em-eus kemeret ; hogen pa on eet d'he havoud, n'em-eus ket he havet gwerh ;

15. He zad hag he mamm a gemero anezi, hag a gaso ganto aroueziou he gwerhded da henaoured kêr a vezo e-tal ar porz ;

16. Hag an tad a lavar : Va merh em-eus roet da wreg d'an den-ze : hogen o veza deuet d'he hasaad,

17. E ro dezi eur gwall-ano, o lavaroud : N'em-eus ket kavet da verh gwerh ; ha setu amañ koulskoude aroueziou gwerhded va merh. Neuze e tispiegint an dillad dirag henaoured kêr.

18. Hag henaoured ar gêr-ze a gemero an ozah hag a lakay e skourjeza ;

19. Hag ohpenn e varnint anezañ da gant sikl arhant a roy da dad ar plah-yaouank ; o veza ma en-deus mezekaet gand eur gwall-ano eur werhez euz a Izrael : ha da wreg en-devezo anezi, ha ne hello ket he has kuit keit ha ma vevo.

20. Mar deo gwir ar pez a lavar, ha ma n'eus ket bet kavet a aroueziou a werhded er plah-yaouank ;

21. E kasint anezi er-mêz euz a zor ti he zad, ha tud ar gêr-ze a labezo anezi gand mein, hag e varvo, o veza ma he-deus greet eur gwall argaruz e Izrael, o koueza e gastaouerez e ti he zad : hag e tenni an droug euz da greiz.

22. Mar kousk eur re gand gwreg eun all, e varvint o-daou, da lavaroud eo, an avoultrer hag an avoultrerez : hag e tenni an droug euz a Izrael.

23. Ma he-deus roet eur plah-yaouank he ger da veza pried, hag hi gwerh, ha mar kav eur re anezi e kêr ha ma kousk ganti,

24. O hasi o-daou e-tal porz ar gêr-ze, hag e vezint labezet gand mein : ar plah-yaouank, o veza n'he-deus ket garmet, hag hi e kêr : hag ar gwaz, o veza ma en-deus mezekaet gwreg e nesa ; hag e tenni an droug euz da greiz.

25. Hogen mar kav eur re en eur park eur plah-yaouank pehini he-deus roet he ger da veza pried ; mar krog enni ha ma kousk ganti, ne varvo nemetañ :

26. Ar plah-yaouank ne houzañvo netra, ha n'eo ket dellezeg a varo : rag evel ma sav eul laer a-eneb e vreur, ha ma lam e vuhez digantañ ; evel-se ar plah-yaouank-se he-deus gouzañvet.

27. Heh-unan edo en eur park : garmet he-deus, ha n'eo deuet den evid he dieubi.

28. Mar kav eur re eur plah-yaouank gwerh, ha pehini n'he-deus ket roet he ger da veza pried ; mar krog enni, ha ma kousk ganti, ha mar bez diskuliet kement-se d'ar varnerien ;

29. An hini a zo bet o kousked ganti a roy da dad ar plah-yaouank hanter-kant sikl arhant ; ha da wreg en-devezo anezi, o veza ma en-deus he mezekaet : ne hello ket he has kuit keit ha ma vevo.

30. Ne gemero den gwreg e dad, ha ne zizoloy he mezegez.

XXIII. Pennad.

Piou a dle beza pellaet euz a strollad an Aotrou. Glanded. Gouestlou.

1. Ar spaz, e pehini e vezo bet friket pe trohet e gellou, pe krennet e bidenn, n'ez ay ket e strollad an Aotrou.

2. Ar bastard, da lavaroud eo, an hini a zo ganet euz a eur hast, n'ez ay ket e strollad an Aotrou, beteg an degved rumm.

3. An Ammonited hag ar Vohabited ne daint ket e strollad an Aotrou goude zoken an degved rumm ; ne daint biken.

4. O veza n'eo ket fellet dezo mond ar hoh arbenn gand bara ha dour war an hent, pa zeujot er-mêz euz an Ejipt : hag o veza ma o-deus kaset en da eneb Balaam, mab Beor, euz a Vezopotamia e Siria, evid da villiga.

5. Hogen an Aorou da Zoue ne fellas ket dezañ selaoui Balaam, hag e troas e valloz e bennoz dit, o veza ma kare ahanout.

6. Ne ri ket a beoh ganto, ha ne glaski ket ober vad dezo keit ha ma vevi da viken.

7. Ne argarzi ket an Idumean, rag da vreur eo ; nag an Ejiptian, rag diavêziad out bet en e vro.

8. Ar re a vezo ganet diouto a yelo e strollad an Aotrou d'an trede rumm.

9. Pa'z i d'ar brezel a-eneb da enebourien, en em viri a bep tra droug.

10. Mar bez en ho touez eun den, hag a ve bet saotret en noz dre eun huñvre, ez ay er-mêz euz ar hamp,

11. Ha ne zistroy ket, ken n'en-devezo gwalhet e zaouarn war ar pardaez : ha goude kuz-heol e tistroy d'ar hamp.

12. Eul leh az-pezo er-mêz euz ar hamp, e peleh ez i war-vêz.

13. Eur peulig a zougi ouz da houriz, ha pa arzaoi, e ri eun toull krenn ; hag e holoi gand douar ar pez az-pezo dizoloet,

14. Pa vezi savet alese. (Rag an Aotrou da Zoue a vale e-kreiz da gamp, evid da zieubi, ha lakaad da enebourien etre da zaouarn) : ha bezet santel da gamp, ha na vezet gwelet ennañ netra a louz, gand aon n'az tilezje an Aotrou.

15. Ne likii ket etre daouarn e vestr, ar sklav a zo tehet etrezeg ennout.

16. Chom a ray ganez el leh ma karo, hag eh arzoy en unan euz da gêriou ; na neh ket anezañ.

17. Ne vezo ket a hast e-touez merhed Izrael, nag a hastaouer e-touez mibien Izrael.

18. Ne ginnigi ket gopr ar hast na gwerz ar hi e ti an Aotrou da Zoue petra bennag m'az-pezo gouestlet ; rag argarzuz int o-daou dirag an Aotrou da Zoue.

19. Ne roi ket d'az preur war gampi, nag arhant, nag edou, na netra all ebed ;

20. Hogen hepken d'an diavêziad. D'az preur e presti kement en-devezo ezomm, heb kampi ebed ; evid ma vennigo an Aotrou da Zoue ahanout e kement a ri gand da zaouarn, en douar e pehini ez ez evid beza e berhenn.

21. Pa'z-pezo greet eur gouestl d'an Aotrou da Zoue, ne zaeli ket d'e zeveni ; rag an Aotrou da Zoue e houlenn stard diganez ; ha mar daleez, e vezo niveret dit evid pehed.

22. Ma ne rez ket a ouestl, e vezi dibehed.

23. Hogen ar pezh a vezo eet eur wech er-mêz euz da vuzellou a viri, hag e ri evel ma eh-eus gouestlet d'an Aotrou da Zoue, o veza ma eh-eus komzet gand da youl ha dre da henou.

24. Pa'z i e gwinienn da nesa, debr rezin kement ha ma kiri ; hogen na gas ket ganez er-mêz.

25. Pa'z i e park da vignon, e helli terri tamoezennou, hag o frika en da zorn ; hogen ne drohi ket gand ar falz.

XXIV. Pennad.

Paea ar goprou. Lezel d'ar beorien an dilerh euz an ed hag euz ar rezin.

1. Mar kemer eun den eur wreg, ha mar da ganti ; ha ma en gav ket hi trugarez dirag e zaoulagad, en abeg da eun dra louz bennag, e skrivo-eñ eul levr²¹⁹-rann, e roy dezi en he dorn, hag a gaso anezi kuit euz e di,

2. Pa vezo eet kuit, mar kemer eun ozah all,

3. Ha mar deu ivez hemañ d'he hasaad, ha da rei dezi eul levr-rann, ha d'he has kuit euz e di ; pe mar deu zoken da vervel ;

4. An ozah kenta ne hello ket he hemeroud da wreg, o veza ma eo bet saotret hi, ha ma eo deuet da veza argaruz dirag an Aotrou : na laka ket da behi an douar a dle an Aotrou da Zoue da rei dit e kerz.

5. Pa en-devezo eun den kemeret eur wreg a-nevez a vezo, ne day ket d'ar brezel, ha ne vezo roet dezañ karg olleg ebed ; hogen en em rei a ray d'e di heb gwall ebed, evid ma en em laouennay gand e wreg e-pad eur bloaz.

6. Ne gemer ket e gouestl ar mên-vilin izella nag an uhella ; rag bevidigez eun den eo a vez kinniget dit.

7. Mar bez kavet eun den o spia e vreur euz a vugale Izrael, ha mar kemer ar gopr anezañ goude ma vezo gwerzet gantañ, e vezo lazeta ; hag e tenni an droug euz da greiz.

8. Mir gand preder na gouezi e gouli al loventez ; hogen gra kement a zesko dit ar veleien euz a ouenn Levit, dioc'h ar pezh em-eus gourhemennet dezo ; ha gra eñ gand evez.

9. Ho-pezet koun euz ar pezh a reas an Aotrou ho Toue da Vari en hent, goude ma oeh deuet er-mêz euz an Ejipt.

10. Pa houlenni digand da nesa eun dra bennag a dle dit, n'ez i ket en e di evid kas eur gouestl²²⁰ ganez ;

11. Hogen er-mêz e chomi en da zav, hag eñ a gaso dit ar pezh en-devezo :

12. Ha mar deo paour, ar gouestl ne chomo ket 'hed an noz en da di ;

13. Hogen e zisteurel a ri dezañ raktal a-barz kuz-heol ; evid ma kousko en e wiskamant ha ma vennigo ahanout, ha ma vezi kavet gwirion dirag an Aotrou da Zoue.

14. Ne zinahi ket e hopr d'an ezommeg ha d'ar paour, daoust pe eo da vreur, pe eun diavêziad a chom ganez en da zouar, hag en diabarz euz da berzier :

15. Hogen disteurel a ri dezañ en heveleb dezis gopr e labour, a-barz kuz-heol, o veza ma eo paour, ha ma vev dioutañ : gand aon na harmje en da eneb etrezeg an Aotrou, ha na ve niveret dit evid pehed.

16. Ne vezo ket lazeta an tadou evid ar vibien, nag ar vibien evid an tadou ; hogen pep hini a varvo evid e behed e-unan.

²¹⁹ eul levr : fazi, sur a-walh. "eul lizer".

²²⁰ gouestl : kréd.

17. Ne dorri ket ar gwir e-keñver an diavêziad, nag e-keñver an emzivad, ha ne gemeri ket evid gouestl dillad an intañvez.

18. Az-pezo koun penaoz out bet sklav en Ejipt, ha penaoz an Aotrou da Zoue en-deus da dennet ahano : rag-se eo e hourhemennan dit ober an dra-mañ.

19. Pa'z-pezo medet da ed en da bark, hag az-pezo lezet eur malan dre ankounah, ne zistroi ket evid e gemeroud : hogen e lezel a ri d'an diavêziad, d'an emzivad, ha d'an intañvez, evid ma vennigo ahanout an Aotrou da Zoue e oll labour da zaouarn.

20. Paz'-pezo dastumet frouez ar gwez olived, ne zistroi ket evid dastumi ar pez a vezo chomet war ar gwez ; hogen o lezel a ri d'an diavêziad, d'an emzivad, hag an intañvez.

21. Pa'z-pezo dastumet frouez da winienn, ne zastumi ket ar bodou-rezin a vezo chomet, hogen bez' e vezint evid an diavêziad, an emzivad hag an intañvez.

22. Az-pezo koun penaoz out bet da-unan sklav en Ejipt ; ha rag-se e hourhemennan dit ober an dra-mañ.

XXV. Pennad.

*Kastiz ar skourjez. Breur dalhet da zimezi gand intañvez e vreur.
E tleer da vezezi Amalek.*

1. Mar sav dael etre eur re bennag, ha mar galvont ar varnerien, an hini a anavezint evid beza gwirion, e roint ar gwir dezañ ; an hini a vezo anavezint evid beza fallagr, a varnint a fallagriez.

2. Hogen mar gwelont penaoz an hini en-deus pehet a zellez beza kannet, hel likiint da hourveza, hag e likiint e ganna dirazo. Dioh ment ar pehed e vezo niver an taoliou :

3. En heveleb doare hepken ne vezo ket roet ohpenn daou-ugent taol ; gand aon n'ez-aje kuit da vreur goude beza bet roget gand krizder dirag da zaoulagad.

4. Ne erei ket genou an ejenn a zorn da ed war al leur.

5. Mar chom daou vreur kevred, ha mar marv unan anezo heb bugale, gwreg an hini maro ne zimezo ket da eun all, hogen breur heh ozah he hemero da wreg, hag a lakay had²²¹ da zevel d'e vreur.

6. Hag e roy d'ar henta-ganet ano e vreur, evid na vezo ket kollet e ano e Izrael.

7. Hogen ma ne fell ket dezañ dimezi da wreg e vreur, ar vaouez a yelo e-tal dor gêr, hag a gomzo ouz an henaoured, o lavaroud : Breur va ozah ne fell ket dezañ sevel ano e vreur e Izrael, na va hemeroud da wreg.

8. Ha raktal e likiint e hervel, hag e raint goulennou outañ. Ma lavar-eñ : Ne fell ket din he hemeroud da wreg :

9. Ar vaouez a dostay outañ dirag an henaoured, hag a denno e votez dezañ euz e droad ; hag e skopo-hi ouz e zremm, o lavaroud : Bezet greet evel-se d'an den ha ne zav ket ti e vreur ;

10. Hag e di a vezo galvet e Izrael, Ti an divotez.

11. Ma hoarvez kruz etre daou zen, ha mar deraouont striva an eil oh egile : ha mar fell da wreg unan anezo tenna heh ozah euz a zaouarn egile a zo kreñvoh ; ma astenn he dorn, ha mar krog en e vezegez²²²-eñ ;

12. E trohi he dorn, heb ma'z-pezo truez outi.

13. N'az-pezo ket en da zah meur a bouez, re vrasoh ha re vihannoh :

14. Ha ne vezo ket en da di eur bouezell vrasoh hag eur bouezell vihannoh.

²²¹ had : diskennidi.

²²² e vezegez : e gellou. Savet diwar ar ger "mez" (evel e galleg).

15. Eur pouez reiz ha gwir az-pezo, hag eur bouezell gevatal ha gwir ; evid ma vevi pell amzer war an douar en-devezo roet dit an Aotrou da Zoue.

16. Rag an Aotrou da Zoue a argarz an hini a ra kement-se, hag a gasa peb gaou.

17. Az-pezh koun euz ar pezh en-deus greet dit Amalek en hent, pa zeujout er-mêz euz an Ejipt ;

18. Penaoz e tiarbennas ahanout, hag e lazas ar re a oa e lost da arme, hag a oa arzavet ker skuiz e oant, ha pa oas-te dinerzet gand an naon, ha gand al labour ; ha ne zoujas ket Doue.

19. Pa en-devezo eta an Aotrou da Zoue roet ehan dit, ha lakaet da bleaga dindannout an oll vroadou a vezo war-dro dit en douar en-deus lavaret e roje dit ; e lami e ano euz a zindan an neñv. Laka evez n'e ankounac'hay ket.

XXVI. Pennad.

Diwar-benn ar previdiou hag an deogou.

1. Pa vezi eet en douar a dle an Aotrou da Zoue da rei dit e kerz ; pa'z-pezo e biaouet, ha pa chomi ennañ,

2. E kemerer ar previdiou euz da oll frouez, hag e likii anezo en eur gest, hag ez i d'al leh en-devezo dilennet an Aotrou da Zoue, evid ma vezo eno galvet e ano :

3. Hag ez i da gaoud ar beleg, a vezo e karg en deiziou-ze, hag e liviri dezañ : Anzavoud a ran hirio dirag an Aotrou da Zoue, penaoz unan deuet e-barz an douar endoa touet d'on tadou e roje deom.

4. Hag ar beleg o kemeroud ar gest euz da zaouarn, he lakay dirag aoter an Aotrou da Zoue.

5. Hag e liviri dirag an Aotrou da Zoue : Ar Siriad a yeas war-lerh va zad, hag eñ a ziskennas en Ejipt, hag a chomas eno evel eun diavêziad en eun niver bihan ; hogen kreski a reas eno en eur bobl vraz ha kreñv ha diniver.

6. Hag an Ejiptianed a hlaharas hag a heskinas ahanom, hag a lakaas warnom kargou ponner-braz.

7. Ha ni a harmas ouz an Aotrou, Doue on tadou, pehini a zelaouas ahanom, hag a zellas ouz on izelled, ouz ol labour, hag ouz on anken :

8. Hag eñ on tennas euz an Ejipt gand eun dorn kreñv, gand eur vreh astennet, gand eur spont braz, gand aroueziou ha burzudou :

9. Hag on lakaet en-deus da zond el leh-mañ, hag en-deus roet deom an douar-mañ, e pehini e tiver al lêz hag ar mel.

10. Ha rag-se eo e kinnigan bremañ previdiou frouez an douar en-deus roet an Aotrou din. O lezel a ri dirag an Aotrou da Zoue, ha goude beza azeulet an Aotrou da Zoue,

11. E ri banvez gand ar madou en-devezo roet an Aotrou da Zoue dit ha d'az ti, te hag al Levit, hag an diavêziad a zo ganez.

12. Pa'z-pezo peurroet an deog euz da frouez, an trede bloaz euz an deogou, o roi d'al Levit, ha d'an diavêziad, ha d'an emzivad, ha d'an intañvez, evid ma tebrint en diabarz euz da berzier, ha ma o-devezo o gwalh.

13. Hag e liviri dirag an Aotrou da Zoue : Tennet em-eus euz va zi kement a zo gouestlet, hag e roet em-eus d'al Levit, ha d'an diavêziad, ha d'an emzivad, ha d'an intañvez, evel ma eh-eus e hourhemennet din : n'on ket eet e-biou d'az kelennou, ha n'em-eus ket ankounac'haet da hourhemennou.

14. N'em-eus ket debret anezo em hañv, ha n'em-eus ket o lakaet a-du evid eun dra dihlan bennag, ha n'em-eus ket roet anezo evid ar hañvou. Sentet em-eus ouz mouez an Aotrou va Doue, ha greet em-eus kement eh-eus gourhemennet din.

15. Sell ouzom euz da zantuar, hag euz al leh uhel euz an neñvou e peleh e chomez, ha bennig da bobl Izrael, hag an douar eh-eus roet deom, evel ma eh-eus e douet d'on tadou, douar e pehini e tiver al lêz hag ar mel.

16. An Aotrou da Zoue a hourhemenn dit hirio ober ar helennou-ze hag ar barnidegeziou-ze ; ha ma viri, ha ma seveni anezo a-greiz da galon hag a-greiz da ene.

17. Dilennet en-deus hirio an Aotrou, evid ma vezo Doue dit, evid ma kerzi en e heñchou, ha ma viri e lidou, hag e gelennou, hag e varnedigeziou, ha ma senti ouz e hourhemenn.

18. Hag an Aotrou en-deus da zilennet hirio, evid ma vezi e bobl e-unan evel ma en-deus e lavaret dit, hag evid ma viri e oll gelennou,

19. Hag evid m'az lakay da veza ar brudeta euz an oll boblou en-deus krouet, evid e veuleudi, hag evid e ano, hag evid e hloar ; hag evid ma vezi pobl santel an Aotrou da Zoue, evel en-deus e lavaret.

XXVII. Pennad.

Aoter vên war aod ar Jourdan. Lid e-keñver ar bennoziou hag ar malloziou.

1. Neuze Moizez hag enaoured Izrael, a hourhemennas d'ar bobl, o lavaroud : Mirit an oll gelennou a hourhemennan deoh hirio.

2. Ha pa vezo treuzet ar Jourdan ganeoh, ha ma viot eet en douar a roy dit an Aotrou da Zoue, e savi mein braz, hag e lifri anezo gand raz ;

3. Evid ma helli skriva warnezo oll heriou al lezenn-mañ, pa'z-pezo treuzet ar Jourdan : ha pa'z i e-barz an douar a roy dit an Aotrou da Zoue, douar e pehini e tiver al lêz hag ar mel, evel m'en-deus touet d'az tadou.

4. Pa ho-pezo eta treuzet ar Jourdan, e savot ar mein-ze, evel ma hourhemennan deoh hirio, war menez Hebal, hag e lifri anezo gand raz.

5. Sevel a ri ivez eno eun aoter d'an Aotrou da Zoue, gand mein, ha ne vezo stoket houarn outo,

6. Gand mein dizoare ha digompez : hag e kinnigi war an aoter-ze sakrifisou-losk d'an Aotrou da Zoue :

7. Hag e lazi ostivou a beoh, hag e tebri eno, hag e ri banvez dirag an Aotrou da Zoue.

8. Hag e skrivi splann ha frêz war ar vein an oll heriou euz al lezenn-mañ.

9. Neuze Moizez hag ar veleien euz a ouenn Levit a lavaras da oll bobl Izrael : Laka evez, ha selaou, Izrael : Hirio out deuet da bobl d'an Aotrou da Zoue :

10. Selaoui a ri e vouez, hag e ri ar helennou hag ar barnedigeziou a hourhemennan dit.

11. Ha Moizez a hourhemennas d'ar bobl en deiz-se, o lavaroud :

12. Ar re-mañ a zavo evid bennizien²²³ ar bobl, war menez Garizim, goude ma vezo treuzet ar Jourdan : Simeon, ha Levit, ha Juda, hag Isakar, ha Jozef, ha Benjamin.

13. Ha rag eneb e savo ar re-mañ evel millizien²²⁴, war menez Hebal : Ruben, ha Gad, hag Aser, ha Zabulon, ha Dan, ha Neftali.

14. Hag al Levited a gomzo, hag a lavaro da oll dud Izrael gand eur vouez uhel :

²²³ bennizien : bennigerien.

²²⁴ millizien : milligerien.

15. Milliget eo an den a ra eur skeudenn gizellet pe deuzet, argaruz d'an Aotrou, labour dorn eur micherour, hag he laka en eul leh kuz ; hag an oll bobl a responto, hag a lavaro : Amen.

16. Milliget eo an hini ha na enor ket e dad hag e vamm : hag an oll bobl a lavaro : Amen.

17. Milliget eo an hini a zileh harzou e nesa : hag an oll bobl a lavaro : Amen.

18. Milliget eo an hini a laka an den dall da fazia war an hent, hag an oll bobl a lavaro : Amen.

19. Milliget eo an hini a dorr ar varn e-keñver an diavêziad, an emzivad, hag an intañvez ; hag an oll bobl a lavaro : Amen.

20. Milliget eo an hini a gousk gand gwreg e dad, hag a zizolo pallenn e wele ; hag an oll bobl a lavaro : Amen.

21. Milliget eo an hini a gousk gand eul loen bennag ; hag an oll bobl a lavaro : Amen.

22. Milliget eo an hini a gousk gand e hoar, merh e dad pe merh e vamm ; hag an oll bobl a lavaro : Amen.

23. Milliget eo an hini a gousk gand e vamm-gaer ; hag an oll bobl a lavaro : Amen.

24. Milliget eo an hini a sko gand e nesa e kuz ; hag an oll bobl a lavaro : Amen.

25. Milliget eo an hini a zegemer goprou evid skuilla ar gwad dinamm ; hag an oll bobl a lavaro : Amen.

26. Milliget eo an hini ha na chom ket stard e geriou al lezenn-mañ, ha na zeven ket anezo evid gwir : hag an oll bobl a lavaro : Amen.

XXVIII. Pennad.

Bennoz d'ar re a viro lezenn an Aotrou. Malloz d'ar re he zorro.

1. Hogen mar selaouez lezenn an Aotrou da Zoue, oh ober hag o viroud e oll hourhemennou a gemennan dit hirio, an Aotrou da Zoue az lakay da veza uhelloc'h eged an oll boblou a chom war an douar.

2. Hag an oll vennoziou-mañ a zeuy warnout, hag a heulio ahanout, gand ma selaoui kelennou an Aotrou.

3. Benniget e vezi er gêr, ha benniget er-mêz.

4. Benniget e vezo frouez da gov, ha frouez da zouar, ha frouez da loened, tropellou da zaout, ha krevier da zeñved.

5. Benniget e vezo da zolierou, ha benniget da zilerhiou.

6. Benniget e vezi o vond e-barz hag o vond er-mêz.

7. Lakaad a ray an Aotrou da enebourien a zavo en da eneb, da goueza dirazout : dre eun hent e teuint en da eneb, ha dre zeiz hent e tehint a-zirazout.

8. An Aotrou a gaso e vennoz war da gaviou, ha war oll labouriou da zaouarn : hag az pennigo en douar az-pezo bet digantañ.

9. An Aotrou a zavo da bobl santel dezi heh-unan, evel ma en-deus e douet dit, ma virez gourhemennou an Aotrou da Zoue, ha ma kerzez en e heñchou.

10. Hag an oll boblou euz an douar a welo penaoz ano an Aotrou a zo galvet warnout, hag e spontint razout.

11. An Aotrou az lakay da fonna e peb madou, e frouez da gov, hag e frouez da loened, hag e frouez da zouar, en-deus touet an Aotrou d'az tadou e roje dit.

12. An Aotrou a zigoro e deñzor mad-meurbed, an neñv, evid ma roy glao d'az touar en e amzer, hag e vennigo oll labouriou da zaouarn, ha te a roy e prest da galz a boblou, ha ne gemeri e prest digand hini.

13. An Aotrou az lakay ouz ar penn, ha nann ouz al lost, ha bepred e vezi a-uz, ha nann a-iz, gand ma selaoui gourhemennou an Aotrou da Zoue, a gemennan dit hirio, ha ma viri ha ma seveni anezo ;

14. Ha ne zistroi ket diouto, nag a-zehou, nag a-gleiz, ha ne heuilli, na ne gaeli doueed a-ziavêz.

15. Ma ne fell ket dit selaoui mouez an Aotrou da Zoue, na miroud, na seveni e oll hourhemennou hag e lidou, a gemennan dit hirio, an oll valloziou-mañ a zeuy warnout, hag a heuillo ahnaout.

16. Milliget e vezi er gêr, ha milliget er-mêz.

17. Milliget e vezo da zolierou, ha milliget da zilerhiou.

18. Milliget e vezo frouez da gov, ha frouez da zouar, tropellou da zaout, ha bandennou da zeñved.

19. Milliget e vezi o vond e-barz, ha milliget o vond er-mêz.

20. An Aotrou a gaso warnout naonegez ha dienez, hag ar hastiz en oll labouriou a ri ; ken n'en-devezo da gaset da get, ha da gollet e berr amzer, en abeg d'az kwall-oberiou, gand pere ez-pezo va dilezet.

21. An Aotrou a gaso ivez dit ar vosenn, ken n'e-devezo da vevezet diwar an douar, e pehini ez ez evid beza e berhenn.

22. An Aotrou az kloazo gand ar baourentez, ha gand an derzienn, ha gand ar yenienn, ha gand an dommder, ha gand ar wrez, ha gand ar gwall êr, ha gand an duan, hag e heskino ahanout ken na vezi kollet a-grenn.

23. An neñv a zo a-zioh dit a vezo a arem ; hag an douar a vahez a vezo a houarn.

24. An Aotrou a roy d'az touar poultr e-leh glao ; hag euz an neñv e tiskenko ludu warnout, ken na vezi kaset da get.

25. An Aotrou az lakay da goueza dirag da enebourien ; dre eun hent ez i en o eneb, ha dre seiz hent e tehi, hag e vezi skignet dre oll rouanteleziou an douar.

26. Da gorv maro a vezo da voued da oll evned an neñv ha da loened an douar, ha den n'o haso kuit.

27. An Aotrou a skoy warnout gand gouli an Ejipt, ha gand gal, ha gand debron, e kevrenn ar horv dre behini eo dikarget an naon : ha ne helli ket o yac'haad.

28. An Aotrou a zegaso dit follentez, ha dallentez, ha diboell a spered.

29. En eur bafala ez i e-kreiz an deiz, evel ma eo boazet an den dall da bafala en deñvalijenn, ha ne reizi ket da heñchou. E peb amzer e vezi droug-prezeget, hag e vezi mahet gand an nerz ; ha n'az-pezo den evid da denna a boan.

30. Eur wreg a gemeri, hag eun all a gousko ganti. Eun ti a zavi, ha ne chomi ket ennañ. Eur winienn a blanti, ha ne zastumi ket he rezin.

31. Da ejenn a vezo lazet dirazout, ha ne zebri ket anezañ. Da azen a vezo skrapet dirazout, ha ne vezo ket azroet dit. Da zeñved a vezo roet d'az enebourien, ha ne zeuy den d'az skoazella.

32. Da vibien ha da verhed a vezo roet da eur bobl all ; da zaoulagad o gwelo hag a weñvo dirazo 'hed an deiz, ha ne vezo ket a nerz en da zorn.

33. Frouez da zouar, ha frouez da oll labouriou a vezo debret gand eur bobl ha n'anavezez ket : bepred e vezi droug-prezeget, ha bemdez e vezi mahet :

34. Ha saouzanet e vezi gand ar spont euz ar pez a welo da zaoulagad.

35. An Aotrou a skoy warnout gand eur gwall houli en da zaoulin hag en da zivesker ; ha ne helli ket beza yac'haet adaleg seul an troad beteg lein ar penn.

36. An Aotrou az kaso, te, hag ar roue ez-pezo lakaet warnout, e-kreiz eur bobl ha na anavezi ket, na te, na da dadou : hag eno e serviji doueed a-ziavêz, koad ha mein.

37. Ha te a vezo mantret, ha te a vezo da hoariell d'an oll boblou e-touez pere en-devezo da gaset an Aotrou.

38. Kalz a had a daoli en douar, ha nebeud e tastumi ; rag ar hilleien-raden e zebro oll.

39. Eur winienn a blanti hag a bali, ha ne evi ket a win anezi, ha ne zastumi netra diouti ; rag gand ar preñved e vezo gwastet.

40. Gwez-olived ez-pezo en da oll harzou, ha n'en em lardi ket gand eoul ; rag digoueza²²⁵ a raint, hag ez aint da goll.

41. Mibien ha merhed a hani, ha n'ez-pezo ket anezo en da gichenn ; rag e sklaverez e vezint kaset.

42. Da oll wez hag oll frouez da zouar a vezo bevezet gand an duan.

43. An diavêziad a zo en da douez en da zouar, a zavo dreistout, hag a vezo uhelloh ; hogen te a ziskenno, hag a vezo izelloh.

44. Eñ eo a roy e prest dit, ha te ne roi ket e prest dezañ. Eñ eo a vezo ouz ar penn, ha te a vezo ouz al lost.

45. An oll valloziou-ze a zeuy warnout, a heskino hag a heulio ahanout, ken na vezi kollet a-grenn ; o veza n'az-pezo ket selaouet mouez an Aotrou da Zoue, ha n'az-pezo ket miret e hourhemennou hag al lidou en-deus kemennet dit.

46. Hag i a vezo da arouez ha da vuzud ennout, hag en da ouenn da viken :

47. O veza n'az-pezo ket servijet an Aotrou da Zoue el levenez, hag e dudi da galon, e fonnder pep tra.

48. Servija a ri da enebour, a gaso dit an Aotrou, en naon, hag er sched, hag en noazded, hag en dienez euz a bep tra : hag eñ a lakay eur yeo houarn war da chouk, ken n'en-devezo da gaset da get.

49. An Aotrou a gaso warnout eur bobl a-bell, hag euz a bennou pella an douar, e doare eun erer a nij gand têrded ; eur bobl ha ne helli ket anaoud he yez ;

50. Eur bobl rok-braz, pehini n'en-deus azaouez ebed evid ar re goz, na truez ebed evid ar vugaligou.

51. Hag i a zebro frouez da loened, ha frouez da zouar, ken na vezi kollet a-grenn : ha ne lezo ganez nag ed, na gwin, nag eoul, na tropellou saout, na bandennou deñved, ken n'en-devezo da gaset da get.

52. Da vaha a ray en da oll gêriou ; ha da vuriou kreñv hag uhel, e pere ez-pezo lakaet da fiziañs, a vezo diskaret en da oll zouar. Gronnet e vezi en diabarz euz da berzier en da oll zouar, a ro dit an Aotrou da Zoue.

53. Debri a ri frouez da gov, ha kig da vibien ha da verhed en-devezo roet dit an Aotrou, gand ar reuz hag ar mantr e pere e vezi mahet gand da enebour.

54. Ar gwaz kizidig en da douez, ha gadal-braz, a zinaho ouz e vreur hag ouz e wreg a zo kousket en e gichenn,

55. Ha ne roy ket dezo euz a gig e vibien a behini e tebro, o veza n'en-devezo netra all e-pad ar gronnadur²²⁶, hag en dienez e pehini e vezi dalhet gand da enebour en diabarz euz da berzier.

56. Ar vaouez tener ha kizidig, pehini na helle ket kerzoud, na lakaad he zroad war an douar, gand he dinerzded hag he hizidigez vraz, a zinaho ouz heh ozah a zo kousket en he hichenn, rei dezañ euz a gig he mab hag he merh,

²²⁵ digoueza : “divesa“ er skrid-orin. Marteze “koueza, digoueza“.

²²⁶ gronnadur : euz ar verb “gronna“.

57. Hag euz an hudurnez kiguz a zeu euz he hov, hag euz ar bugel nevez-ganet : rag hi a zebro o bugale e kuz, en abeg d'an dienez euz a bep tra e-pad ar gronnadur ha d'ar mantr gand pehini e vezi mahet gand da enebour en diabarz euz da berzier.

58. Ma ne virez ket ha ma ne rez ket oll heriou al lezenn-mañ, a zo skrivet el levr-mañ, ha ma ne zoujez ket e ano madelezuz hag euzuz, da lavaroud eo, an Aotrou da Zoue ;

59. An Aotrou a gresko da houliou, ha gouliou da ouenn, gouliou braz ha kendalhuz, kleñvejou droug ha peurbaduz.

60. Lakaad a ray da zistrei warnout oll houliou an Ejipt, rag pere az-poa aon, hag i en em stago ouzit :

61. Hag ohpen an Aotrou a zegaso warnout an oll gleñvejou, hag an oll houliou, pere n'int ket skrivet war levr al lezenn-mañ, ken na vezi diskaret gantañ.

62. Hag en eun niver bihan e chomi, goude beza bet ken paot ha stered an neñv, o veza n'az-pezo ket selaouet mouez an Aotrou da Zoue.

63. Hag evel ma eo en em laouennaet an Aotrou warnoh, oh ober vad deoh hag o kreski ahanoh e niver, evel-se en em laouennay oh ho koll hag oh ho kas da get, evid ma viot tennet diwar an douar e pehni ez i evid beza e berhenn.

64. An Aotrou a skigno ahanout e-touez an oll boblou, euz an eil penn d'ar penn all euz an douar : hag e serviji eno doueed a-ziavêz pere ne anavezez ket, na te na da dadou, doueed koad ha mein.

65. Hag e-touez ar poblou-ze n'az-pezo ket a ehan, ha ne vezo ket a ziazez da zeul da droad : rag an Aotrou a roy dit eno eur galon spontig, ha daoulagad gweñvet, hag eun ene mantret gand glahar.

66. Da vuhez a vezo evel a-zispill dirazoud. Aon az-pezo noz-deiz, ha ne gredi ket en da vuhez.

67. Dih ar mintin e liviri : Piou a roy din ar pardaez ? Ha dioh ar pardaez : Piou a roy din ar mintin ? En abeg da aon da galon ha d'ar pez a weli gand da zaoulagad, e vezi spontet.

68. An Aotrou az kaso adarre war listri d'an Ejipt, dre eun hent dre behini en-doa lavaret dit n'her gweljes mui. Eno e vezi gwerzet d'az enebourien, evid beza da vellou ha da vitizien, ha ne vezo ket kalz a dud evid da brena

XXIX. Pennad.

Kevredigez kreteet etre Doue hag Izrael.

Gourdrouz a-eneb ar re a dorro ar gevredigez.

1. Setu amañ geriou ar gevredigez a hourhemennas an Aotrou da Voizez ma raje gand bugale Izrael, e douar Moab, ohpenn ar gevredigez en-doa greet ganto e Horeb.

2. Ha Moizez a halvas Izrael oll, hag a lavaras dezo : C'hwi hoh-eus gwelet kement en-deus greet an Aotrou dirazoh en Ejipt, da Faraon, ha d'e oll zervijerien, ha d'e oll zouar,

3. An arnodou braz o-desu gwelet ho taoulagad, an aroueziou-ze, hag ar burzudou braz-meurbed ;

4. Hag an Aotrou n'en-deus ket roet deoh bete vremañ eur spered lemm, ha daoulagad a hell gweloud, ha dioukouarn a hell klevoud.

5. Ho kaset en-deus e-pad daou-ugent vloaz dre an distro : ho tillad n'int ket koazet gand an amzer, na botou ho treid n'int ket bet bevezet gand ar gozni.

6. N'hoh-eus ket debret a vara, n'hoh-eus evet na gwin na bier : evid ma oufeh penaoz eo me an Aotrou ho Toue.

7. Pa oh deuet beteg al leh-mañ, ha Sehon, roue Hesebon, hag Og, roue Basan, a zeuas da ziarbenna ahanom evid stourmi ouzom, hag e lazjom anezo.

8. Ha ni a gemeras o douar, hag a roas anezañ e kerz da Ruben ; ha da Had, ha da hanter-vreuriez Manase ;

9. Mirit eta geriou ar gevredigez-mañ, ha sevenit o, evid ma ouiot ervad kement a reot.

10. Savet oh oll hirio dirag an Aotrou ho Toue, priñsed ho preuriezou, hag an henaoured, hag an doktored, hag oll bobl Izarel.

11. Ho pugale, hag ho kwragez, hag an diavêziad a chom ganez er hamp, heb niveri an droherien geuneud, hag an dougerien dour :

12. Evid ma tremeni e kevredigez an Aotrou da Zoue, hag el le a ra hirio an Aotrou da Zoue ganez :

13. Evid m'az lakay da veza e bobl dezañ e-unan, ha ma vezo eñ da Zoue, evel ma en-deus e lavaret dit, hag evel ma en-deus e douet d'az tadou, da Abraham, da Izaak, ha da Jakob.

14. Ha n'eo ket ganeoh hepken e ran ar gevredigez-mañ, hag e kretan al le-mañ ;

15. Hogen gand kement hini a zo bremañ, ha gand kement hini a vezo da houde,

16. Rag c'hwi a oar penaoz om chomet e douar an Ejipt, ha penaoz on-eus tremenet e-kreiz ar broadou, hag o tremenoud drezo,

17. Hoh-eus gwelet argarzidegez hag hudurnezou, da lavaroud eo, o idolou, ar hoad hag ar mên, an arhant hag an aour, an arhant hag an aour a gaelent.

18. Na vezet ket eta en ho touez eur gwaz pe eur vaouez, eun tiad pe eur vreuriez, a zistroje hirio e galon dioh an Aotrou on Doue, evid mond da gavoud ha da zervija doueed ar broadou-ze, hag evid ma vezo en ho touez eur wrizienn a zougo bestl ha c'hwevder.

19. Ha pa en-devezo klevet geriou al le-mañ, n'en em venniget ket e-unan en e galon, o lavaroud : Ar peoh a vezo ganen, pa gerzin e drougiez va halon : hag ar vezventi a dorro va zehed.

20. An Aotrou ne zistaolo ket dezañ e behed : hogen neuze e froudenn vraz-meurbed a zavo evel moked ennañ, hag e savo droug ennañ ouz an den-ze ; hag an oll valloziou a zo skrivet el levr-mañ a gouezo warnezañ ; hag an Aotrou a lamo e ano euz a-zindan an neñv ;

21. Hag e kaso da goll euz a-douez oll vreuriezou Izrael, hervez ar valloziou a zo skrivet el levr euz al lezenn hag euz ar gevredigez-mañ.

22. Hga e lavaro ar rumm-tud a zeuy war-lerh, hag ar vugale a vezo ganet pelloh, hag an diavêzidi a zeuy a-bell, pa welint gouliou an douar-ze, hag ar hleñvejou a hoarvezo gantañ a-berz an Aotrou ;

23. Pa welint penaoz en-deus e losket gand ar soufr ha gand tanijenn an holen, en heveleb doare na vezo mui hadet, ha ne zavo ennañ netra a hlaz, e skwer euz a zismantr Sodom ha Gomer, Adam, ha Seboim, a zismantras an Aotrou en e vuanegz hag en e froudenn ;

24. Hag an oll boblou a lavaro : Perag en-deus-eñ an Aotrou greet kement d'an douar-ze ? A betra e teu buanegez vraz e froudenn ?

25. Hag e vezo lavaret dezo : O veza ma o-deus dilezet ar gevredigez en-doa greet an Aotrou gand o zadou, pa dennas anezo euz an Ejipt :

26. Ha ma o-deus servijet hag azeulet doueed a-ziavêz pere ne anavezent ket, ha da gaelidigez pere ne oent ket bet dileuret.

27. Rag-se eo savet droug en Aotrou a-nebe ar vro-ze, hag en-deus kaset warnezi an oll valloziou a zo skrivet el levr-mañ ;

28. Hag en-deus o haset kuit euz o douar en e vuaneged, hag en e froudenn, hag en e argarzedigez vraz : hag en-deus o zaolet en eur vro all, evel ma her gweler hirio.

29. An traou-mañ a oa kuzet en Aotrou on Doue, hag anad int bremañ deom, ha d'or bugale da viken, evid ma raim oll heriou al lezenn-mañ.

XXX. Pennad.

*Ar Juzevien a zistroio ouz an Aotrou, hag eñ en-devezo truez outo.
Bez' e heller êz miroud gourhemennou Doue.*

1. Pa vezo eta c'hoarvezet ganez an oll draou-ze, ar vennoz pe ar valloz, evel emeus o lakaet dirag da zaoulagad ; pa vezo mantret da galon gand ar heuz, e-mesk an oll vroadou e-touez pere en devezo da skignet an Aotrou da Zoue,

2. Pa vezi distroet outañ ha pa zenti ouz e hourhemennou, evel ma e gemennan dit hirio, te ha da vugale, a-greiz da galon hag a-greiz da ene ;

3. An Aotrou da Zoue az tenno euz ar sklaverez, hag en-devezo truez ouzit ; hag e tastumo c'hoaz ahanout euz a-greiz an oll boblou e-touez pere en-devezo da skignet kent.

4. Ha pa vijes bet skignet beteg penn pella ar bed, an Aotrou da Zoue az tenno ahanou,

5. Az tegemero hag az lakay da vond en douar o-deus bet da dadou, hag e vezi perhenn dezañ : hag, o rei e vennoz dit, az lakay da veza paotoh eged n'eo bet da dadou.

6. An Aotrou da Zoue a emwado da galon, ha kalon da ouenn, evid ma kiri an Aotrou da Zoue a-greiz da galon hag a-greiz da ene, ha ma helli beva.

7. Hag eñ a lakay da goueza ar valloziou-ze war da enebourien, ha war ar re a gasay hag a heskino ahanout.

8. Hogen te a zistroy hag a zelaouo mouez an Aotrou da Zoue, hag e seveni an oll hourhemennou a gemennan dit hirio ;

9. Hag an Aotrou da Zoue az kargo a vadou e oll oberiou da zaouarn, e gouenn da gov, hag e frouez da loened, hag e frouezedigez da zouar, hag er fonnder euz a bep tra. Rag an Aotrou a zistroy ouzit, evid en em laouennaad diwar da benn e peb mad, evel ma eo en em laouennaet diwar-benn da dadou ;

10. Gand ma selaoui mouez an Aotrou da Zoue, ha ma viri e hourhemennou hag al lidou a zo skrivet el lezenn-mañ, ma tistroi ouz an Aotrou da Zoue a-greiz da galon hag a-greiz da ene.

11. Ar gourhemenn-mañ a gemennan dit hirio, n'eo ket dreistout, na pell diouzit,

12. Na diazezet en neñv, evid ma hellfes lavaroud : Piou ahanom a hell pignad en neñv evid ma e zegaso deom, evid ma her hlevim ha ma her mirim ?

13. Na lakaet en tu all d'ar mor, evid ma teujes da zigarezi ha da lavaroud : Piou ahanom a hello treuzi ar mor, evid ma e zegaso deom, evid ma her hlevim ha ma raim ar pezh a zo gourhemennet deom ?

14. Hogen ar ger a zo tost-braz dit, en da henou hag en da galon, evel ma her gri.

15. Gwel penaoz em-eus hirio lakaet dirazout ar vuhez hag ar mad, hag en eneb ar maro hag an droug ;

16. Evid ma kiri an Aotrou da Zoue, ha ma kerzi en e heñchou, ha ma viri e hourhemennou, hag e lidou, hag e varnedigeziou ; evid ma vevi, ha ma 'z kresko e niver, ha ma'z pennigo en douar e pehini ez i evid beza perhenn ennañ.

17. Hogen mar distroez da galon dioutañ, ha ma ne fell ket dit e zelaoui, ha goude beza bet touellet, ma azeulez ha mar servijez doueed a-ziavêz,

18. E tiouganan dit hirio penaoz ez i da get, hag e chomi berr amzer en douar, e pehini, goude beza treuzet ar Jourdan, ez i evid beza e berhenn.

19. Gervel a ran hirio da dest an neñv hag an douar, penaoz em-eus lakaet dirazout ar vuhez hag ar maro, ar vennoz hag ar valloz. Dilenn eta ar vuhez, evid ma vevi, te ha da ouenn.

20. Ha ma kiri an Aotrou da Zoue, ha ma senti ouz e vouez, ha ma en em stagi outañ (rag eñ eo da vuhez, hag hirded da zeiziu), evid ma chomi en douar en-deus touet an Aotrou d'az tadou, da Abraham, da Izaak, ha da Jakob, e roje dezo.

XXXI. Pennad.

Moizez a anv Jozue evid rena ar bobl en e leh.

Gourhemenni a ra lenn al lezenn d'ar bobl bep seiz vloaz.

1. Moizez eta a yeas hag a lavaras an oll draou-ze da oll Izrael.
2. Hag e lavaras c'hoaz dezo : C'hweh-ugent vloaz em-eus hirio, ha ne hellan mui mond ha dond ; ha dreist-oll pa en-deus lavaret an Aotrou din : Ne dreuzi ket ar Jourdan-mañ.
3. An Aotrou da Zoue eta e dreuzo en da raog : eñ a vevezo an oll vroadou-ze dirazout, ha te a zeuy da berhenn dezo : ha Jozue pehini a welez amañ a yelo en da raog, evel ma en-deus e lavaret an Aotrou.
4. Hag an Aotrou a ray dezo, evel ma en-deus greet da Zehon ha da Og, roueed an Amorreed, ha d'o douarou ; hag o haso da get.
5. Pa en-devezo eta an Aotrou lakaet anezo etre ho taouarn, e reot dezo evel ma hoh-eus greet d'ar re all, hervez ma em-eus e gemennet deoh.
6. Kalonekait hag en em gennerzit ; n'ho-pezet ket a aon, ha na spontit ket razo ; rag an Aotrou da Zoue eo e-unan da rener dit, ha n'az lezo ket, ha n'az tilezo ket.
7. Ha Moizez a halvas Jozue, hag a lavaras dezañ dirag Izrael oll : En em greñva, ha bez kaloneg ; rag te eo a lakay ar bobl-se da vond en douar en-deus touet an Aotrou d'o zadou e roje dezo, ha te eo e lodenno dioh ar sort :
8. Hag an Aotrou pehini eo da rener, a vezo e-unan ganez : n'az lezo ket ha n'az tilezo ket : n'az-pet ket a aon, ha na spont ket.
9. Moizez a skrivas eta al lezenn-mañ, hag a roas anezi d'ar veleien, mibien Levit, pere a zouge arh kevredigez an Aotrou, ha da oll henaoured Izrael.
10. Hag e hourhemennas dezo, o lavaroud : Pep seiz vloaz, da vloaz an distaol, da ouel an tabernaklou,
11. Pa en em zastumo oll vugale Izrael, evid en em ziskoueza dirag an Aotrou da Zoue, el leh en-devezo dilennet an Aotrou, e lenni geriou al lezenn-mañ dirag Izrael oll pere o hlevo ;
12. Hag an oll bobl o veza bet dastumet, ken ar wazed, ken ar merhed, hag ar vugaligou, hag an diavêzidi a vezo en diabarz euz da berzier, evid pa he hlevint, ma teskint anezi, ma toujint an Aotrou ho Toue, ma virint ha ma sevenint oll heriou al lezenn-mañ ;
13. Ha ma hello ivez o hlevoud ho pugale pere n'o anavezont ket bremañ, ha ma toujint an Aotrou o Doue en oll zeiziu ma chomint en douar a vezo deoh, pa ho-pezo treuzet ar Jourdan.
14. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Setu e tosta deiz da varo : galv Jozue, hag it ho-taou dirag tabernakl an testeni evid ma roin va urziou dezañ. Moizez ha Jozue a yeas eta, hag a chomas en o zav dirag tabernakl an testeni ;

15. Hag an Aotrou en em ziskouezas eno er peul-koabr, a arzavas ouz dor an tabernakl.

16. Hag an Aotrou a lavaras da Voizez : Setu te a ya da gouska gand da dadou, hag ar bobl-mañ a zavo hag en em zaotro gand doueed a-ziavêz en douar ez a da chom ennañ ; hag eno e tilezo ahanon, hag e torro ar gevredigez em-boa greet ganti.

17. Ha va froudenn a zavo outi en deiz-se : ha me a zilezo anezi, hag e kuzin va dremm outi, hag hi a vezo bevezet. An oll boaniou hag an oll hlahariou he have, en heveleb doare ma lavaro en deiz-se : O veza evid gwir n'ema ket Doue ganen, eo e teu din kemend-all a boaniou.

18. Hogen me en em guzo, hag a holoin va dremm en deiz-se, en abeg d'an oll zrougou en-devezo greet oh heulia doueed a-ziavêz.

19. Bremañ eta skrivit evidoh ar ganaouenn-mañ, ha deskit hi da vugale Izrael, evid ma he dalhint dindan eñvor, ha ma he hanint dre o genou, ha ma vezo din ar ganaouenn-ze da desteni e-touez bugale Izrael.

20. Rag me a lakay anezo da vond en douar, e pehini e red al lêz hag ar mel, evel ma em-eus e douet d'o zadou. Ha pa o-devezo debret, ha pa o-devezo o gwalh, ha pa vezint deuet lard, e troid ouz doueed a-ziavêz, hag e servijint anezo : droukkomza a raint diwar va fenn, hag e torrind va hevedigez.

21. Pa vezo kouezet warnezo kalz poaniou ha glahariou, ar ganaouenn-mañ a zougo outo eun testeni, ha ne vezo lamet gand ankounah ebed euz a henou o gouenn. Rag me a anavez o mennoziou, hag a oar a hirio petra a dleont da ober, a-barz ma o likiin da vond en douar em-eus touet e rojen dezo.

22. Moizez eta a skrivas ar ganaouenn, hag a zeskas anezi da vugale Izrael.

23. Neuze an Aotrou a hourhemennas da Jozue, mab Nun, hag a lavaras dezañ : En em greñva ha bez kaloneg ; rag te eo a lakay bugale Izrael da vond en douar em-eus touet e rojen dezo ; ha me a vezo ganez.

24. Goude eta m'en-doe Moizez peurskrivet geriou al lezenn-ze en eul levr,

25. E hourhemennas d'al Levited, a zouge arh kevredigez an Aotrou, o lavaroud :

26. Kemerit al levr-mañ ha likit eñ e-kichenn arh kevredigez an Aotrou ho Toue, evid ma vezo eno da desteni en da eneb, o ! Izrael.

27. Rag me a oar peger penneg ha peger kaled eo ho penn. Ha me c'hoaz beo, hag o veza ganeoh, hoh-eus bepred enebet ouz an Aotrou : ha n'her greet ket gwasoh pa vezin maro ?

28. Strollit dirazon oll henaoured ho preuriezou hag ho toktored, evid ma livirin dirazo ar geriou-ze, ha ma halvin en o eneb an neñv hag an douar.

29. Rag me a oa penaoz goude va maro e reot fallagriez, hag en em zistroot kerkent diwar an hent em-eus gourhemennet deoh : hag e kouezo poaniou warnoh en amzer diweza, pa ho-pezo greet droug dirag an Aotrou, oh e argadi gand oberiou ho taouarn.

30. Moizez eta a lavaras, dirag oll bobl Izrael, geriou ar ganaouenn-ze, adaleg an eil penn beteg egile.

XXXII. Pennad.

Kanaouenn Voizez. Pignad a ra war menez Abarim hag e sell ouz douar Kanaan.

1. Selaouit, neñvou, ar pezh ez an da lavaroud : ra glevo an douar geriou va genou.
2. Ra zeuio da devaad va helennadurez evel glao ; ra zivero va lavar evel gliz, evel glao war ar geot, hag evel banneou war al leton.
3. Rag meuli a rin ano an Aotrou : roit da Zoue uhel-meurbed an enor a zo dleet dezañ.

4. Oberiou Doue a zo klok, hag e oll heñchou a zo reiz : eun Doue feal eo, hag heb fallagriez ebed, gwirion hag eeun.
5. Ar re a zo bet ha n'int mui e vugale, o-deus pehet en e eneb oh en em zaotra, gouenn droug ha gouenn fall.
6. Hag hounnez eo an anaoudegez-vad eh-eus evid an Aotrou, pobl diskiant ? Ha n'eo ket eñ eo da dad, pehini en-deus da biaouet, da hreet ha da grouet ?
7. Az-pezh soñj euz an deziou tremenet, menn er rummou kent : goulenn digand da dad, hag e roy da anaoud dit ; digand da re goz, hag e livirint dit.
8. Pa rannas an Uhella ar broadou, pa zistrollas bugale Adam, e lakaas harzou ar poblou hervez an niver euz a vugale Izrael.
9. Hogen lodenn an Aotrou eo e bobl ; ha Jakob a zo rann e zegouez.
10. E gavet en-deus en eun douar dihentet, en eul leh euzuz, hag en eun distro ehon : e renet en-deus tro-war-dro ; e zesket en-deus, hag e viret en-deus evel mab e lagad.
11. Evel ma halv an erer e ererigou evid o lakaad da nijal, ha ma hournij a-zioh dezo ; evel-se en-deus astennet e ziouskell, hag en-deus e zavet, hag en-deus e zouget war e ziouskoaz.
12. An Aotrou hepken eo bet da rener dezañ ; ha ne oa ket a zoue a-ziavêz gantañ.
13. E lakaet en-deus en eun douar uhel, evid ma tebro frouez ar parkeier, evid ma suno mel ar mên hag eoul ar roh ar galeta ;
14. Amann ar zaout, ha lêz an deñved²²⁷, gand lard an oan, hag an tourhed euz a vro Basan, ha bouhed, gand flour gwiniz ; ha ma evo gwad-gwini ar purra.
15. An hini a oa karet a zo deuet da veza lard, hag a zo savet a-eneb Doue ; larteet, teveet, karget a vadou, en-deus dilezet Doue e Grouer, hag eo pellaet diou Doue e Zalver.
16. E heget o-deus, oh heulia doueed a-ziavêz, hag e vuanegez o-deus tennet warnezo gand o fallagriezou.
17. Azeulet o-deus an diaouled ; ha n'o-deus ket azeulet Doue : azeulet o-deus doueed ha na anavezent ket, doueed nevez-deuet, ha na oant ket bet kaelet gand o zadou.
18. Dilezet eh-eus an Doue en-deus da hanet ; hag ankounac'haet eh-eus an Aotrou en-deus da grouet.
19. An Aotrou o veza gwelet kement-se a zavas droug ennañ, o veza ma eo bet heget gand e vibien ha gand e verhed.
20. Hag eñ a lavaras : Kuza a rin va dremm outo, hag eh evesain ouz o diwez ; rag eur wall ouenn eo, bugale displeal int.
21. I o-deus va heget gand an hini ha n'eo ket Doue, hag o-deus va lakaet da vuanekaad gand o gwanderiou : ha me a hego anezo gand an hini ha n'eo ket va fobl, hag o lakaad a rin da vuanekaad diwar-benn eur vroad tud diskiant.
22. Kroget eo an tan em froudenn, hag e tevo beteg goueled an ivern : bevezi a ray an douar gand e oll louzou ; entana a ray ar menezioù beteg ar sol.
23. Me a zegaso dezo pep seurt poan, hag e tennin va oll virou warnezo.
24. Dismantret e vezint gand an naonegez, hag an evned a zispennno anezo, o kregi enno gand krizder : kas a rin outo al loened fero, ha kounnar an naered, hag ar re oll a stlej war an douar.
25. Ar hleze o haso da get en diavêz, hag ar spont en diabarz, ar paotr yaouank kerkoulz hag ar plah yaouank, ar bugel ouz ar vronn hag an den koz.
26. Lavaret em-eus : Peleh emaint ? Ar zoñj anezo a lamin euz a douez an dud.

²²⁷ lêz an deñved : ?

27. Hogen gourzetet em-eus en abeg da vuanegez hoh enebourien ; gand aon na zeuje an enebourien-ze da stambouha ha da lavaroud : On dorn uhel eo, ha n'eo ket an Aotrou en-deus greet kement-se.
28. Eur bobl diskiant ha diboell eo.
29. A-youl e vent fur ha poelleg, hag e ragwelfent o diwez !
30. Penaoz e hello unan stourmi ouz mil, ha daou lakaad deg mil da dehi ? Ha n'eo ket o veza ma en-deus Doue gwerzet anezo, hag an Aotrou serret anezo ?
31. Rag on Doue n'eo ket evel o doueed-i : hag on enebourien a zo ar varnerien euz a gement-se.
32. O gwini a zo gwini Sodom ha gwini fabourziou Gomorra : o rezin a zo rezin bestl, ha c'hwero en o bodou-rezin.
33. Bestl naered eo o gwin, ha kontam aspiged ne bare ket.
34. Ha n'eo ket kuzet kement-se ennon, ha n'eo ket siellet an teñzoriou ?
35. Ar veñjañs a zo din, ha me a zistaolo deoh er mare, evid ma kouezo o zroad : tost ema dezo o holl, ha nesaad a ra an amzer.
36. An Aotrou a varno e bobl, hag en-devezo truez ouz e zervijerien ; pa welo penaoz eo dispennet ar re a oa serret, ha deuet da get ar re all.
37. Hag eñ a lavaro : Peleh ema o doueed, e pere edo o fiziañs,
38. Euz a bere e tebrent lard ar viktimou, hag euz a bere eh event gwin ar sakrifisou ? Savent ha kennerzent ahanoh, ha skoazellent ahanoh en hoh ezomm.
39. Gwelit penaoz on va-unan, ha penaoz n'eus Doue all ebed nemedon. Me eo a laz ha me eo a laka da veva : me eo a hloaz, ha me eo a bare, ha n'eus hini a hellfe tenna netra diouh va dorn.
40. Sevel a rin va dorn etrezeg an neñv, hag e livirin : Me a vev bepred.
41. Ma lemman va hleze heñvel ouz al luhed, ha mar diframm va dorn ar varn, en em veñjin euz va enebourien hag e tistaolin kemm-ouzh-kemm d'ar re o-deus kas ouzin.
42. Mezvi a rin va birou gand gwad ar re lazet ; hag ar re euz va enebourien pere ne vezint ket bet lazet, a vezo kaset e sklaverez.
43. Broadou, meulit e bobl, o veza ma veñjo gwad e zervijerien : en em veñji a ray euz hoh enebourien, hag e vezo trugarezuz e-keñver douar e bobl e-unan.
44. Moizez a zeuas eta, hag a lavaras oll heriou ar ganaouenn-mañ dirag ar bobl her hleve, eñ ha Jozue, mab Nun.
45. Ha Moizez a beurlavaras an oll heriou-ze, o komza ouz Izarel oll :
46. Hag e lavaras dezo : Likit don en ho kalonou an oll heriou a destenian hirio deoh, evid ma kemennot d'ho pugale da viroud ha da ober ha da beurober kement a zo skrivet el lezenn-mañ :
47. Rag n'eo ket en aner eo bet roet ar helennou-ze deoh ; hogen evid ma kavo pep hini ahanoh e vuhez enno, hag oh ho miroud, ma chomot pell amzer en douar, e pehini ez eot evid beza e berhenn, pa vezo treuzet ar Jourdan ganeoh.
48. Hag an Aotrou a gomzas ouz Moizez en heveleb deiz, o lavaroud :
49. Pign, war ar menez Abarim-ze, da lavaroud eo, menez an tremeniou ; war menez Nebo, pehini a zo e douar Moab, rag-eneb da Jeriko : ha sell ouz douar Kanaan, a roin e kerz da vugale Izrael, ha marv war ar menez.
50. Pa vezi pignet eno e vezi unanet gand da bobl, evel ma eo maro Aaron, da vreur, war menez Hor, ha am eo bet unanet gand e bobl.
51. O veza ma hoh-eus pehet em eneb, e-kreiz bugale Izrael, el leh anvet doureier an enebiez, e Kadez, e distro Sin ; ha n'hoh-eus ket va meulet dirag bugale Izrael.
52. Gweloud a ri dirazout an douar a roin da vugale Izrael, ha n'ez i ket e-barz.

XXXIII. Pennad.

Moizez a vennig an daouzeg breuriez, hag a ziougan ar pez a dle c'hoarvezoud ganto.

1. Setu amañ ar vennoz gand pehini Moizez, den Doue, a vennigas bugale Izrael kent ma varvas.
2. Hag eñ a lavaras : An Aotrou a zeuas euz a Sinai, hag a zavas warnom euz a Seir : euz a venez Faran en em ziskouezas, ha meur a vil sant gantañ. En e zorn dehou edo al lezenn a dan.
3. Karet en-deus ar poblou, an oll zent a zo en e zorn : hag ar re a dosta ouz e dreid a zegemero lod euz e gelenn.
4. Moizez en-deus gourhemennet deom eul lezenn, e degouez da oll bobl Jakob.
5. Eur roue a vezo d'ar bobl reiz, pa vezo unanet priñsed ar bobl gand breuriezou Izrael.
6. Bevet Ruben, ha na varvet ket, ha bezet bihan e niver.
7. Setu amañ bennoz Juda : Selou, Aotrou, mouez Juda, hag ambroug anezañ etrezeg e bobl : e zaouarn a stourmo evid e bobl, hag e skoazeller e vezo ouz heh enebourien.
8. Da Levit e lavaras ivez : Da glokter²²⁸ ha da gelennadurez a zo en da zen santel eh-eus arroudet en dempatsion hag eh-eus barnet e doureier an Enebiez :
9. Pehini en-deus lavaret d'e dad ha d'e vamm : N'hoh anavezan ket ; ha d'e vreudeur : Ne ouzon ket piou oh ; ha ne anavezjont ket o bugale o-unan. Ar re-ze o-deus miret da heriou hag o-deus sevenet e gevredigez,
10. Ha da varniou, o ! Jakob !, ha da lezenn, o ! Izrael : kinniga a raint an ezañs en da froudenn, hag ar sakrifis-losk war da aoter.
11. Bennig e nerz, o ! Aotrou, ha degemer labour e zaouarn. Sko war gein e enebourien ; ha na zavet ket ar re o-deus kas outañ.
12. Hag eñ a lavaras da Venjamin : An hini karet-braz gand an Aotrou a chomo ennañ gand fiziañs : evel er gambr a eured e chomo 'hed an deiz, hag etre e ziskoaz e tiskuizo.
13. Hag eñ a lavaras da Jozef : E zouar a vezo leun a vennoz an Aotrou, euz a frouez an neñv, euz a hliz hag euz an eienennou a zo dindan an douar•
14. Euz ar frouez diwanet gand an heol ha gand al loar ;
15. Euz ar frouez a zav war lein ar meneziou koz ha war ar hrehiou peurbaduz ;
16. Hag euz a frouez an douar, hag euz e fonnder. Bennoz an hini a zo en em ziskouezet er vodenn, ra zeuy war penn Jozef, ha war kern penn an hini a zo bet evel eun Nazaread e-touez e vreudeur.
17. E gened a zo heñvel ouz kenta-ganet an taro ; e gerniel a zo evel kerniel ar rinoseros : ganto e wento ar poblou beteg penn pella an douar. Evel-se e vezo rummou braz Efraim, ha kant ha kant mil Manase.
18. Hag eñ a lavaras da Zebulon : En em laouena, Zebulon, en da ergerz, ha te Isakar, en da deltou.
19. Gervel a raint ar poblou war ar menez, hag eno e lazint viktimou a reizded. I a zuno evel lêz an dihlann euz ar mor, hag an teñzoriou kuzet en trêz.
20. Hag e lavaras da Had : Gad a zo bet karget a vennoz ; arzavet eo evel eul leon, er vreh hag er penn eo kroget.

²²⁸ glokter : ? (euz "klok").

21. E briñselez en-deus gwelet, o veza ma eo lakaet an doktor en e lodenn : gand priñsed ar bobl eo eet ; miret en-deus lezennou an Aotrou, hag e varnedigez gand Izrael.

22. Hag eñ a lavaras da Zan : Dan a zo evel eul leon yaouank, en em skigna a ray pell diogh Basan.

23. Hag eñ a lavaras da Neftali : Er fonnder e vevo Neftali, ha leun e vezo a vennoziou an Aotrou ; ar mor hag ar hreisteiz a vezo dezañ.

24. Hag eñ a lavaras da Aser : Ra vezo benniget Aser en e vugale ; ra vezo hetuz d'e vreudeur ; ha ra zoubo e droad en eoul.

25. A houarn hag a arem e vezo e votou. Evel ma eo bet, Aser, deiziou da yaouankiz, e vezo ivez da gozni.

26. N'eus Doue all ebed evel Doue ar bobl reiz : an hini a bign en neñv eo da skoazeller. E veurdez eo a laka ar hoabr da redeg.

27. En uhella e chom, hag en izella e tiskouez e vreh peurbaduz. Disteurel a ray a-zirazout da enebour, hag e lavaro : ra zeuy da get.

28. Izrael a chomo gand fiziañs, hag a vezo e-unan. Lagad Jakob a welo eun douar ed ha gwin, hag an neñvou a deñvallay gand ar gliz.

29. Gwenvidig out-te, Izrael : piou a zo heñvel ouzit, o ! pobl !, a zo salvet en Aotrou ? Tiren da gennerz eo, ha kleze da hloar. Da enebourien az tinaho, ha te a lakay da droad war o gouzoug.

XXXIV. Pennad.

Maro Moizez. E veuleudi.

1. Moizez a bignas eta euz a gompezenn Moab war menez Nebo, e lein Fasga, rag-eneb da Jeriko : hag an Aotrou a ziskouezas dezañ oll vro Halaad beteg Dan.

2. Hag oll Neftali, ha douat Efraim ha Manase, hag oll zouar Juda beteg ar mor diweza,

3. Ha tu ar hreisteiz, ha mêziou Jeriko, kêr ar palmez, beteg Segor.

4. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Hennez eo an douar diwar-benn pehini em-eus touet da Abraham, da Izaak ha da Jakob, o lavaroud : d'az kouenn e roin. E welet eh-eus gand da zaoulagad, ha ne dremen ket di.

5. Ha Moizez, servijer an Aotrou, a varvas eno, e douar Moab, dre youl an Aotrou :

6. Hag eñ a vezias anezañ en eun draonienn e douar Moab, rag-eneb da Fogor : ha den ebed n'en-deus anavezet e vez bete-vremañ.

7. C'hweh-ugent vloaz en-doa Moizez pa varvas : neuze ne oa ket teñval e zaoulagad nag e zent ne lohent ket.

8. Ha bugale Izrael a ouelas anezañ e kompezenn Moab e-pad tregont devez : hag ar re a ouele Moizez a baouezas o hañv dezañ.

9. Hogen Jozue, mab Nun, en-doe ar spered a furnez, o veza m'en-doa Moizez lakaet e zaouarn a-zioh dezañ : ha bugale Izrael a zentas outañ, hag a reas ar pez en-doa gourhemennet an Aotrou da Voizez.

10. Ha ne zavas mui a brofed en Izrael heñvel ouz Moizez a gement a oe anavezet gand an Aotrou dremm-ouz-dremm :

11. Hag e reas kement a aroueziou hag a vurzudou, a lakaas an Aotrou anezañ da ober e douar an Ejipt, e-keñver Faraon, hag e oll dud, hag e oll vro ;

12. Hag a ziskouezas eun dorn ker kreñv, hag oberiou ken estlammuz, evel ma reas Moizez dirag Izrael oll.

Levr Jozue

I. Pennad.

Gourhemennou a ra Doue da Jozue.

1. C'hoarvezoud a reas goude maro Moizez, servijer an Aotrou, penaoz an Aotrou a gomzas ouz Jozue, mab Nun, ministr Moizez, hag a lavaras dezañ :
2. Moizez va zervijer a zo maro : sao, ha treuz ar ster Jourdan-ze, te, hag an oll bobl ganez, evid mond en douar a roin da vugale Izrael.
3. Kement leh en-devezo moustret ho troad, a roin deoh, evel ma em-eus e lavaret da Voizez.
4. Adaleg an distro hag al Liban, hag ar ster vraz a Eufratez, oll vro an Heteed beteg ar mor braz rag-eneb d'ar huz-heol, eno e vezo hoh harzou.
5. Hini ne hello enebi ouzoh keit ha ma vevi. Evel ma on bet gand Moizez, e vezin ivez ganez : n'az kasin ket er-mêz, n'az tilezin ket.
6. En em greñva ha bez kaloneg ; rag te eo a lodenno d'ar bobl-se dioh ar sort an douar em-eus lavaret gand le d'o zadou e rojen dezo.
7. En em greñva ha bez kaloneg ; evid ma viri ha ma heuilli an oll lezenn en-deus gourhemennet dit Moizez va zervijer : na zistro diouti nag a-zehou nag a-gleiz, evid ma poelli kement a rez.
8. Na bellaet ket levr al lezenn-ze dioh da henou : hogen prederia a ri warnezañ noz-deiz, evid ma viri ha ma heuilli kement a zo skrivet ennañ. Neuze e kerzi eeun en da hent, hag e poelli anezañ.
9. E hourhemenni a ran dit : en em greñva ha bez kaloneg. N'az-pezh ket a aon ha na spont ket : rag e pe leh bennag ma'z i, an Aotrou da Zoue a vezo ganez.
10. Jozue eta a hourhemennas da briñsed ar bobl, o lavaroud : Tremenit dre greiz ar hamp, ha kemennit d'ar bobl, o lavaroud :
11. Aozit deoh bouedou ; rag a-benn tri deiz e treuzot ar Jourdan, hag ez eot da biaoua an douar a dle da rei deoh an Aotrou ho Toue.
12. Lavaroud a reas ivez d'ar Rubenied ha d'ar Gadeed, ha da hanter vreuriez Manase :
13. Ho-pezet soñj euz ar pezh en-deus gourhemennet deoh Moizez, servijer an Aotrou, o lavaroud : An Aotrou ho Toue en-deus roet deoh an ehan, hag an oll zouar-mañ.
14. Ho kwragez, hag ho pugale, hag ho loened a chomo en douar en-deus roet Moizez deoh en tu-mañ euz ar Jourdan : hogen c'hwi, pere a zo oll tud kreñv, treuzit ar ster gand armou e penn ho preudeur, ha stourmit evito ;
15. Ken na roy an Aotrou an ehan d'ho preudeur, evel ma en-deus e roet deoh, ha ken na vezint ivez perhenn en douar a dle da rei dezo an Aotrou ho Toue : ha goude-ze e titroot d'an douar a zo deoh, hag e chomot ennañ, evel el leh en-deus Moizez, servijer an Aotrou, roet deoh en tu-mañ euz ar Jourdan, rag-eneb d'ar zav-heol.
16. Hag i a lavaras da Jozue : Kement eh-eus gourhemennet deom a raim ; hag e pe leh bennag ma or hasi ez aim.
17. Evel ma on-eus sentet e pep tra ouz Moizez, e sentim ivez ouzit : bezet hepken an Aotrou da Zoue ganez, evel ma eo bet gand Moizez.
18. Piou bennag a enebo ouz da heriou, ha na zento ket ouz kement a hourhemenni dezañ, ra varvo : hogen te, en em greñva, ha bez kaloneg.

II. Pennad.

Spierien Jozue kuzet e ti Rahab ar hast.

1 Jozue, mab Nun, a gasas eta euz a Selim daou spier, hag a lavaras dezo : It, ha sellit piz ouz ar vro, hag ouz kêr Jeriko. Ar re-mañ a gerzas hag a yeas e ti eur hast, anvet Rabah, hag a ziskuizas en he zi.

2. Kement-se a oe roet da anaoud da roue Jeriko, o lavaroud : Setu tud euz a vugale Izrael a zo deuet amañ e-pad an noz, evid selloud piz ouz ar vro.

3. Ha roue Jeriko e gasas da di Rahab, evid lavaroud dezo : Kas kuit an dud a zo deuet d'az kavoud, hag a zo eet en da di ; rag spierien int, hag int deuet evid selloud piz ouz ar vro oll.

4. Hogen ar vaouez-se o kemeroud an dud-se, o huzas, hag a lavaras : E anzavoud a ran, em zi int deuet, hogen ne ouien ket a beleh e oant.

5. Ha pa zerred an nor dioh an noz, int eet er-mêz en heveleb amzer, ha ne ouzon ket peleh int eet. It buan war o lerh, hag e tizot anezo.

6. Hag i a lakaas anezo da bignad war lein he zi, hag a holoas anezo gand hordennou lin a oa eno.

7. Ar re a oa bet kaset war o lerh a yeas dre an hent a gas da wev²²⁹ ar Jourdan : ha kerkent ha ma oent eet er-mêz, e oe serret an nor.

8. Ar re a oa kuzet ne oant ket c'hoaz kousket, pa bignas ar vaouez d'o havoud, hag e lavaras dezo :

9. Anaoud a ran penaoz an Aotrou en-deus lakaet ar vro-mañ etre ho taouarn : rag ar spont ahanoh a zo krog ennom, hag oll dud ar vro-mañ a zo digalonekaet.

10. Klevet on-eus penaoz pa oh deuet er-mêz euz an Ejipt, en-deus an Aotrou dizehet doureier ar mor Ruz pa oah eet e-barz ; ha petra hoh-eus greet e-keñver daou roue an Amorreed, a oa en tu all d'ar Jourdan, Sehon hag Og, pere hoh-eus lazet.

11. Ha pa on-eus klevet kement-se om bet spontet-meurbed ha digalonekaet, ha n'eus chomet nerz ebed ganeom pa oh deuet : rag an Aotrou ho Toue a zo an heveleb Doue a zo war-laez an neñv, ha d'an traoñ war an douar.

12. Bremañ eta touit din dre an Aotrou, penaoz evel em-eus bet trugarez en ho keñver, ho-pezo ivez trugarez e-keñver ti va zad, ha penaoz e root din eur gwir arouez,

13. Evid ma saveteot va zad ha va mamm, va breudeur ha va hoarezed ; ha kement a zo dezo ; hag evid ma or mirot dioh ar maro.

14. Hag ar re-mañ a lavaras dezi : Or buhez a baeo evid da hini, gand n'or gwerzi ket : ha pa en-devezo an Aotrou lakaet ar vro-mañ etre on daouarn, e raim trugarez en da geñver gand pep gwirionez.

15 ; Ho lakaad a reas neuze da vond kuit dre ar prenest a-bouez eur gordenn ; rag he zi a oa harp ouz muriou kêr.

16. Hag hi a lavaras dezo : It etrezeg ar meneziou, gand aon na gavint ahanoh, pa zistroint : ha chomit kuzet eno e-pad tri devez, ken na vezint distro ; ha goude-ze ez eot en hoh hent.

17. Hag ar re-mañ a lavaras dezi : Derhel a raim d'al leh eh-eus ol lakaet da doui,

18. Ma lakaez evid arouez, pa zeuim er vro-mañ, ar gordennig tane-mañ, ha ma he stagez ouz ar prenest dre behini eh-eus ol lakaet da vond kuit ; ha mar dastumez en da di da dad ha da vamm, da vreudeur ha da oll gerent.

²²⁹ da wev : ? Marteze «da roudour ».

19. Mar da eur re er-mêz euz da di, e wad a gouezo war e benn e-unan, ha ni a vezo didamall euz a gement-se. Hogen gwad ar re oll a vezo ganez en da di, a gouezo war or penn, ma laka unan bennag e zorn warnezo.

20. Mar fell dit or gwerza, ha rei da anaoud dirag an oll ar pez a leverom, e vezim diskarg euz an douelladenn eh-eus ol lakaet da ober.

21. Hag hi a lavaras dezo : Ra vezo greet evel ma hoh-eus lavaret : hag o veza o lezet da vond en o hent, e lakaas a-ispill ouz ar prenest eur gordennig tane.

22. Hogen ar re-mañ a gerzas hag a dizas ar menezioù ; hag e chomjont eno e-pad tri devez, beteg ma oe distroet ar re a oa eet war o lerh, pere goude beza o hlasket dre an oll hent, n'o havjont ket.

23. Pa oe eet ar re-mañ e-barz kêr, ar spierien o veza diskennet euz ar menez, a zistroas : hag o veza treuzet ar Jourdan, ez ejont etrezeg Jozue, mab Nun, hag e tanvevelljont dezañ kement a oa c'hoarvezet ganto.

24. Hag e leverjont dezañ : An Aotrou en-deus lakaet an oll vro-ze etre on daouarn, hag ar re oll a chom enni a zo gwall enkrezet gand ar spont.

III. Pennad.

Bugale Izrael a dreuz ar Jourdan.

1. Jozue eta o veza savet a-barz an deiz, a zistignas ar hamp ; hag o veza deuet er-mêz euz a Zetim, eñ hag oll vugale Izrael, e teujont beteg ar Jourdan, hag e chomjont eno tri deiz.

2. Pa oe tremenet an deizioù-ze, an embannerien a dremenas dre greiz ar hamp,

3. O krial : Pa welot arh kevredigez an Aotrou ho Toue, hag ar veleien euz a ouenn Levi pere e dougo, savit ivez c'hwi, hag it war o lerh.

4. Ha bezet etre c'hwi hag an arh eun hed a zaou vil ilinad, evid ma hellot he gweloud a-bell, hag anaoud an hent dre behini ez eot ; rag biskoaz n'hoh-eus kerzet ennañ : ha likit evez na dostafeh ouz an arh.

5. Ha Jozue a lavaras d'ar bobl : En em zantellait ; rag an Aotrou a ray warhoaz burzudou en ho touez.

6. Ha d'ar veleien e lavaras : Kemerit an arh a gevredigez, ha kerzit a-raog ar bobl. Ar re-mañ a reas ar pez a oa gourhemennet dezo, a gemeras an arh, hag a gerzas a-raog ar bobl.

7. Neuze an Aotrou a lavaras da Jozue : Hirio e teraouin da uhellaad ahanout dirag Izrael oll ; evid ma ouezint penaoz, evel ma on bet gand Moizez, e vezin ivez ganez.

8. Hogen te, gourhemenn d'ar veleien a zoug an arh, ha lavar dezo : Pa viot eet e-kreiz dour ar Jourdan, chomit eno a-zav.

9. Ha Jozue a lavaras da vugale Izrael : Tostait amañ, ha selaouit ger an Aotrou ho Toue.

10. Ha c'hoaz : E kement-mañ, emezañ, e ouiot penaoz an Aotrou, an Doue beo a zo en ho kreiz, ha penaoz e wasto dirazoh ar Ganaaeed, hag an Heteed, an Heveed, hag ar Ferezeed, ar Gergeseed, hag ar Jebuseed, hag an Amorreed.

11. Setu arh kevredigez Aotrou an oll zouar a gerzo en ho raog a-dreuz ar Jourdan.

12. Dalhit prest daouzeg den euz a vreuriezoù Izrael, unan a beb breurieze.

13. Ha pa o-devezo ar veleien pere a zoug arh Aotrou Doue an oll zouar, lakaet o zreid e doureier ar Jourdan, an doureier a zo a-iz a redo hag en em denno ; hogen ar re a zeu a-uz, a chomo en eun dolzenn.

14. Ar bobl a zeuas eta er-mêz euz he zeltou, evid treuzi ar Jourdan ; hag ar veleien pere a zouge an arh a gevredigez a gerze en he raog.

15. Pa oe eet ar re-mañ er Jourdan, ha pa zeraouas an dour glebia o zreid (rag ar Jourdan a leugne glannou e aoz²³⁰ e amzer ar mederez),

16. An doureier a zeue a-uz a arzavas en eul leh, hag oh en em zewel e doare eur menez, e weled anezo a-bell, adaleg ar gêr a halver Adom, beteg al leh anvet Sartan : hogen an doureier a oa a-iz a ziskennas e Mor an distro (a halver bremañ ar mor Maro), ha ne chomas banne anezo.

17. Hogen ar bobl a gerze rag-eneb da Jeriko : hag ar veleien pere a zouge arh a gevredigez an Aotrou, a chome war an doureier seh e-kreiz ar Jourdan, hag ar bobl oll a dremene a-dreuz d'an aoz a oa dizehet.

IV.Pennad.

Daouzeg mên kemeret e-kreiz ar Jourdan a zo savet da zerhel soñj euz a dreuzidigez ar ster.

1. Goude ma oe tremenet ar bobl, an Aotrou a lavaras da Jozue :
2. Dilenn daouzeg den, unan dre beb breuriez :
3. Ha gourhemenn dezo kemeroud euz a-greiz aoz ar Jourdan, el leh e pehini eo bet arzavet treid ar veleien, daouzeg mên kaled-braz, a lakeot er hamp, el leh ma ho-pezo henz savet ho teltou.
4. Jozue eta a halvas daouzeg den en-doa dilennet e-touez bugale Izrael, unan euz a beb breuriez,
5. Hag e lavaras dezo : It a-raog arh an Aotrou, ho Toue, e-kreiz ar Jourdan, ha douget ahano pep hini ahanoh eur mên war e skoaz hervez an niver euz a vreuriezu bugale Izrael ;
6. Evid ma vezint da arouez etrezoh. Ha pa ray goude-henn ho pugale ar goulenn-mañ diganeoh : Petra eo da lavaroud ar vein-ze ?
7. Ma leverot dezo : Doureier ar Jourdan a zo en em dennet a-raog arh kevredigez an Aotrou, pa dreuze anezi : rag-se eo bet savet ar vein-ze evid arouez euz a vugale Izrael da viken.
8. Bugale Izrael a reas eta ar pez en-doa kemennet Jozue dezo ; dougen a rejont euz a-greiz ar Jourdan daouzeg mên, evel m'en-doa an Aotrou e hourhemennet dezañ, hervez an niver a vreureziou bugale Izrael, beteg al leh e pehini o-doa savet o hamp ; hag o lakajont eno.
9. Jozue a lakaas ivez daouzeg mên all e-kreiz aoz ar Jourdan, el leh ma oa arzavet ar veleien a zouge an arh a gevredigez : hag i a zo chomet eno bete-vremañ.
10. Hogen ar veleien a zouge an arh a arzavas e-kreiz ar Jourdan, beteg ma oe sevenet kement en-doa an Aotrou gourhemennet da Jozue da lavaroud d'ar bobl, hag en-doa Moizez lavaret dezañ. Hag ar bobl a hastas, hag a dreuzas ar ster.
11. Ha goude ma oe treuzet ganto oll, arh an aotrou a dreuzas ivez, hag ar veleien a gerzas a-raog ar bobl.
12. Mibien Ruben ha Gad, hag hanter-vreuriez Manase a gerze ivez a-raog bugale Izrael, hag i armet, evel m'en-doa gourhemennet Moizez dezo :
13. Ha daou-ugent mil stourmer anezo a gerze dre vandennou ha dre vataillonou²³¹, a-dreuz da gomezennou ha da barkeier kêr Jeriko.

²³⁰ e aoz : e-kreiz

²³¹ dre vataillonou : galleg.

14. En deiz-se an Aotrou a uhellaas kalz Jozue dirag Izrael oll, evid ma teujent d'e zouja, evel m'o-doa doujet Moizez e-pad ma oa beo.
15. Hag e lavaras da Jozue :
16. Gourhemenn d'ar veleien a zoug an arh a gevredigez pigna euz ar Jourdan.
17. Ha Jozue a hourhemennas dezo, o lavaroud : Pignit euz ar Jourdan.
18. Ha pa oe pignet ar re a zouge arh kevredigez an Aotrou, ha pa zeraoujont kerzoud war an douar seh, an doureier a zistroas d'o aoz, hag a redas evel diagent.
19. Hogen ar bobl a bignas euz ar Jourdan en degved deiz euz ar henta miz, hag e lakajont o hamp e Galgala, war-zu ar zav-heol euz a gêr Jeriko.
20. Jozue a lakaas e Galgala an daouzeg mên a oa bet kemeret euz a aoz ar Jourdan,
21. Hag a lavaras da vugale Izrael : Pa ray goude-henn ho pugale ar goulenn-mañ d'o zadou²³²: petra eo da lavaroud ar vein-ze ?
22. C'hwi e zesko dezo, o lavaroud : Izrael en-deus treuzet ar ster Jourdan-ze hag heh aoz war ar seh ;
23. An Aotrou ho Toue o veza dizehet an doureier dirazoh, ken na oe treuzet ar ster ganeoh :
24. Evel m'en-doa greet kent e-keñver ar mor Ruz, pehini a zizehas, ken na oe treuzet ganeom ;
25. Evid ma anavezo oll boblou an douar penaoz eo kreñv-meurbed dorn an Aotrou, hag evid ma toujoh-c'hwi an Aotrou ho Toue e peb amzer.

V. Pennad.

Spont ar Hananded. Emwad ar bobl. Ar mann ne gouez mui.

1. Hogen pa glevas oll roueed an Amorreed, pere a chome en tu all d'ar Jourdan war-zu ar huz-heol, hag oll roueed Kanaan, pere o-doa en o herz al lehiou ar re dosta euz ar mor braz, penaoz en-doa an Aotrou dizehet doureier ar Jourdan dirag bugale Izrael, ken na oe treuzet ganto, o halon a oe mantret, ha ne chomas mui a nerz enno, rag ar spont o-doa rag donedigez bugale Izrael.
2. En amzer-ze an Aotrou a lavaras da Jozue : gra dit kontilli mein, hag emwad evid an eil gwech bugale Izrael.
3. Jozue a reas ar pezh en-doa gourhemennet an Aotrou, hag a emwadas bugale Izrael war dunienn ar pod-mezennou.
4. Ha setu an abeg euz an eil emwad-ze : an oll baotred euz a douez ar bobl, pere a oa deuet er-mêz euz an Ejipt, pere a oa oll tud a vrezel, a varvas en distro e-pad an troiou hir euz an hent :
5. Hag oll e oant bet emwadet. Hogen ar bobl a oe ganet en distro,
6. E-pad an daou-ugent vloaz a ergerz en distro vraz-se, ne oa ket bet emwadet, ken na vije gwastet ar re pere n'o-doa ket selaouet mouez an Aotrou, ha da bere en-doa touet kent penaoz ne ziskouezje ket dezo an douar e pehini e rede al lêz hag ar mel.
7. Mibien ar re-mañ a gemeras leh o zadou, hag a oe emwadet gand Jozue : o veza ma oa ganto o fod-mezenn, evel pa oant bet ganet, ha n'en-doa den emwadet e-pad an hent.
8. Hogen goude ma oant bet emwadet oll, e chomjont en heveleb leh e pehini e oa o hamp, ken na oent deuet da veza pare.

²³² d'o zadou : digand o zadou. (galleg).

9. Neuze an Aotrou a lavaras da Jozue : Tennet em-eus hirio diwarnoh dismegañs an Ejipt. Hag al leh-se a oe anvet Galgala, evel ma eo c'hoaz galvet hirio.

10. Bugale Izrael a chomas e Galgala, hag a reas eno ar Pask er pevarzegved deiz euz ar miz war ar pardaez, e mêziou Jeriko :

11. Hag antronoz e tebrjont euz a frouez an douar, baraou dihoell, hag ed-kras euz an heveleb bloaz.

12. Goude ma o-doe debret euz a frouez an douar, ar mann a ehanas, ha bugale Izrael Izrael ne zebrjont mui pelloh euz ar boued-se ; hogen debri a rejont frouez douar Kanaan euz an heveleb bloaz.

13. Hogen pa edo Jozue en eur park euz a gêr Jeriko, e savas e zaoulagad, hag e welas eun den en e zav dirazañ, hag eur hleze noaz en e zorn : etrezeg ennañ ez eas hag e lavaras dezañ : Hag euz or re out-te, pe euz on enebourien ?

14. Hag hemañ a lavaras : Nann ; hogen ar priñs on euz a arme an Aotrou, hag e teuan bremañ.

15. Ha Jozue en em daolas war e henou d'an douar. Hag oh e azeuli, e lavaras : Petra a fell d'an Aotrou da lavaroud d'e zervijer ?

16. Tenn, emezañ, da votou euz da dreid ; rag al leh e pehini emaut a zo santel. Ha Jozue a reas ar pezh a oa gourhemennet dezañ.

VI. Pennad.

Kêr Jeriko a zo kemeret. Rahab hag e zud a zo saveteet.

1. Hogen Jeriko a oa serret ha kreñveet, gand ar spont rag bugale Izrael, ha den ne grede mond er-mêz na mond e-barz.

2. Hag an Aotrou a lavaras da Jozue : Setu em-esu roet en da zorn Jeriko, hag he roue, hag an oll dud kreñv a zo enni.

3. Grit an dro euz a gêr, eur wech an deiz, c'hwi oll dud a vrezel, hag e reot kement-se e-pad c'hweh devez.

4. Hogen d'ar seizved deiz, ra gemero ar veleien seiz korn-boud, euz ar re gand pere e soner e bloaz ar Jubile, ha ra valeint a-raog an arh a gevredigez. Seiz gwech e reot an dro euz a gêr, hag ar veleien a zono gand o hornou-boud.

5. Ha pa o-devezo sonet ar hornou-boud gand eur son hirroh ha startoh, ha pa en-devezo skoet an trouz ouz ho tiskouarn, ar bobl oll a harmo gand eun trouz braz, ha muriou kêr a gouezo beteg an diazez, ha pep hini a yelo enni dre al leh dirag pehini en em gavo.

6. Ha Jozue, mab Nun, a halvas ar veleien, hag a lavaras dezo : Kemerit an arh a gevredigez, ha seiz beleg all kemeret seiz korn-boud ar Jubile, ha ra valeint dirag arh an Aotrou.

7. D'ar bobl e lavaras ivez : It, ha grit an dro euz a gêr, hag hoh armou ganeoh, ha kerzit a-raog arh an Aotrou.

8. Pa en-doe Jozue echuet da gomza, ar seiz beleg en em lakaas da zenit gand ar seiz korn-boud dirag arh kevredigez an Aotrou :

9. An oll arme gand o armou a gerze a-raog an arh, hag ar bobl oll a yee war-lerh, ha trouz ar hornou-boud a zono skiltr a bep tu.

10. Hogen Jozue en-doa gourhemennet d'ar bobl, o lavaroud : Na harmot ket, ha na vezo ket klevet ho mouez, ha na zeuy ger ebed er-mêz euz ho kenou, ken na vezo deuet an deiz e pehini e livirin deoh : Garmit, ha grit eun trouz braz.

11. Arh an Aotrou a reas eta eur wech en deiz kenta an dro euz a gêr, hag e tistroas d'ar hamp, hag e chomas eno.

12. Ha Jozue o veza savet a-barz an deiz, ar veleien a gemeras arh an Aotrou,
13. Ha seiz anezo a gemeras seiz korn-boud, euz ar re gand pere e soner e bloaz ar Jubile. Hag i a vatee dirag arh an Aotrou en eur zen : ar bobl he-doa armou a yee en he raog²³³, hag ar re all euz ar bobl a yee war-lerh an arh, hag a glevet trouz ar hornou-boud.
14. Ober a rejont eur wech an dro euz a gêr an eil devez, hag e tistrojont d'ar hamp. Evel-se e rejont e-pad c'hweh devez.
15. Hogen d'ar seizved deiz, o veza savet mintin mad, e rejont seiz gwech an dro euz a gêr, evel ma oa bet gourhemennet dezo.
16. Ha pa zone ar veleien gand ar hornou-boud er seizved tro, Jozue a lavaras da oll bobl Izrael : Garmit ha grit trouz ; rag an Aotrou en-deus roet ar gêr deoh.
17. Ra vezo anaouet ar gêr-ze ; ha ra vezo gouestlet d'an Aotrou kement tra a zo enni. Ra chomo hepken beo Rahab ar hast, gand ar re oll a zo ganti en he zi ; rag kuzet he-deus ar re or-boa kaset evid anaoud ar vro.
18. Hogen c'hwi, likit evez na lakfeh ho torn war netra, hervez ma eo bet divennet deoh ; gand aon na zeufeh da wallober ha da denna ar reustl hag ar pehed war oll arme Izrael.
19. Kement a zo greet gand aour ha gand arhant, ha kement lestr arem hag houarn, ra vezo gouestlet d'an Aotrou, ha lakaet en e deñzoriou.
20. An oll bobl eta o veza garmet gand eun trouz braz, hag ar hornou-boud o seni, pa oe klevet ar vouez hag ar son gand an dud oll, ar muriou a gouezas raktal : ha pep hini a bignas dre al leh dirag pehini en em gave : hag i a gemeras kêr,
21. Hag a lazas kement den a oa enni, adaleg ar wazed beteg ar merhed, adaleg ar vugale beteg ar re goz. Skei a rejont ivez gand ar hleze an ejenned, hag an deñved, hag an ezen.
22. Hogen Jozue a lavaras d'an daou zen pere a oa bet kaset evid anaoud ar vro : It e ti ar hast, ha likit hi da zond er-mêz gand kement a zo dezi, evel ma hoh-eus e douet dezi.
23. An daou zen yaouank o veza eta eet en ti, a gasas Rahab, hag he zad hag he mamm, hag he breudeur, hag he herent, hag he oll draou, hag a reas dezo chom er-mêz euz a gamp Izrael.
24. Neuze e tevjont ar gêr, ha kement a oa enni, nemed an aour hag an arhant, hag al listri arem hag houarn, a ouestljont evid teñzor an Aotrou.
25. Hogen Jozue a viras beo Rahab ar hast, ha ti he zad, gand kement he-doa ; hag hi a chomas e-kreiz pobl Izrael, bete-vremañ ; o veza m'he-doa kuzet ar re en-doa kaset evid anaoud Jeriko.
26. Milliget ra vezo dirag an Aotrou, an den a zavo hag a ziazezo a-nevez kêr Jeriko. Ra zaolo he diazez war e genta-ganet, ha ra lakay he doriou war an diweza euz e vugale²³⁴.
27. An Aotrou a oa eta gand Jozue, hag e ano a oa brudet-braz dre an douar oll.

VII. Pennad.

Pobl Izrael a zo trehet gand an enebourien. Akan a zo labezet.

²³³ ar bobl he-doa armou a yee en he raog : Bet skrivet er skrid orin : “ar bobl o-doa armou hag a yee en o raog“. Evid Gonideg e talv “ar bobl“ kement ha “tud ar bobl“.

²³⁴ Ra zaolo he diazez war e genta-ganet, ha ra lakay he doriou war an diweza euz e vugale : da laavred eo : “kondaonet e vo e genta-ganet, hag an hini diweza euz e vugale“.

1. Hogen bugale Izrael a dorras ar gourhemenn a oa bet greet dezo, hag e kemerjont evito ar pezh a oa bet anaouezet. Rag Akan, mab Karmi, mab Zabdi, mab Zare, euz a vreuriez Juda, a gemeras eun dra a oa bet milliget : hag an Aotrou a zavas droug ennañ a-eneb bugale Izrael.

2. En amzer-ze Jozue a gasas tud euz a Jeriko etrezeg Hai, a zo tost da Vetaven, war-zu ar sav-heol euz a gêr Betel, hag a lavaras dezo : It hag anavezit ar vro. Ar re-mañ a reas ar pezh a oa bet gourhemennet dezo, hag a anavezias Hai.

3. Ha pa oent distroet, e leverjont dezañ : Na bignet ket an oll bobl, hogen eet daou pe dri mil den, evid dismantra ar gêr-ze. Perag skuiza en aner an oll bobl a-eneb ken nebeud a enebourien ?

4. Tri mil brezelad a bignas eta. Hogen ar re-mañ o trei o hein raktal,

5. A oe kannaet gand ar re euz a gêr Hai ; ha c’hweh den ha tregont anezo a oe lazet. An enebourien a yeas war o lersh adaleg o dor beteg Sabarim, hag a lazias ar re a dehe etrezeg an draonienn. Ha kalon ar bobl a oe spontet ; hag e teuzias e-giz dour.

6. Hogen Jozue a rogas e zillad, hag en em strinkas war e henou d’an douar dirag arh an Aotrou, eñ hag oll henaoued Izrael, beteg ar pardaez : hag i a daolias poultr war o fennou ;

7. Ha Jozue a lavaras : Allaz, Aotrou va Doue ! perag eo bet fellet dit lakaad ar bobl-mañ da dreuzi ster ar Jourdan, evid ol lakaad etre daouarn an Amorreed, hag evid or holl ? A-youl e oam chomet en tu all d’ar Jourdan, evel ma oam da genta.

8. O Doue va Aotrou ! petra a livirin-me, o weloud Izrael o trei e gein d’e enebourien ?

9. Ar Gananeed a glevo kement-mañ, hag ar re oll a chom er vro-mañ ; hag oh en em zastumi oll, e teuint da gelhia ahanom, hag e lamit on ano diwar an douar. Ha petra a ri-te neuze evid da ano braz ?

10. Hag an Aotrou a lavaras da Jozue : Sao, perag out-te gourvezet war an douar ?

11. Izrael en-deus pehet ; ha torret eo bet gantañ va hevredigez ; kemeret o-deus darn an traou a oa bet milliget, laeret o-deus, gevier o-deus lavaret, ha kuzet o-deus o laeroñsi e-touez o dillad.

12. Izrael ne hello mui derhel stard ouz e enebourien, hag e teho dirazo, o veza ma eo en em zaotret gand an anaouez. Ne vezin mui ganeoh ken n’ho-pezo gwastet an hini a zo kabluze euz an droug-se.

13. Sao, santella ar bobl, ha lavar dezo : En em zantellait evid warhoaz : rag setu petra a lavar an Aotrou, Doue Izrael : Ema an anaouez en da greiz, O Izrael ! : ne helli ket derhel stard ouz da enebourien, ken na vezo gwastet euz ho touez an hini a zo kabluze euz ar gwall-ze.

14. Warhoaz vintin ez eot pep hini en ho preuriez : hag ar sort o veza kouezet war eur vreuriez a dremeno d’ar herentiezou, euz ar herentiezou d’an tiez, euz an tiez d’an dud.

15. Ha piou bennag a vezo kavet kabluze euz an droug-se, a vezo devet gand kement a zo dezañ, o veza ma en-deus torret kevredigez an Aotrou, ha ma en-deus greet fallagriez e Izrael.

15. Jozue eta o veza savet diou ar mintin, a zastumas Izrael dre beb breuriez ; hag e oe kavet breuriez Juda ;

16. Ha pa oe deuet di gand e oll diegeziou, e oe kavet tiegez Zare : hag an tiegez-mañ o veza deuet gand e oll diez, e oe kavet Zabdi ;

17. Hag an ti-ze o veza deuet gand e oll dud, e oe kavet Akan, mab Karmi, mab Zabdi, mab Zare euz a vreuriez Juda.

18. Ha Jozue a lavaras da Akan : Va mab, ro gloar d’an Aotrou, Doue Izrael, hag anzav, ha diskuill din ar pezh eh-eus greet, heb kuza netra.

19. Hag Akan a lavaras da Jozue : Gwir eo penaoz em-eus pehet a-eneb an Aotrou, Doue Izrael ; ha setu petra em-euz greet :

20. O veza gwelet e-touez an diwisk eur vantell tane mad-meurbed, ha daouhant sikl arhant, e teuas c'hoant din d'o skrapa. Hag o veza o hemeret, e kuzis anezo e-kreiz va zelt, hag e likis an arhant en eun toull en douar.

21. Neuze Jozue a gasas tud, pere a redas da delt Akan, hag a gavas kement a oa bet kuzet, el leh m'en-doa lavaret hag an arhant ivez.

22. Hag o veza o zennet oll euz an telt, e tegasjont anezo da Jozue, ha da oll vugale Izrael, hag o zaoljont dirag an Aotrou.

23. Hogen Jozue, hag Izrael oll gantañ, o veza kemeret Akan, mab Zare, hag an arhant, hag ar vantell, hag ar reolenn aour, hag ivez e vibien, hag e verhed, hag e ejenned, hag e ezen, ha e zeñved, ha zoken e delt ha kement a oa dezañ, o hasas da draonienn Akor ;

24. E peleh Jozue a lavaras dezañ : O veza ma eh-eus or reustlet, ra reustlo an Aotrou ahanout en deiz-mañ. Hag Izrael oll a labezas anezañ ; ha kement a oa dezañ a oe bevezet gand an tan.

25. Hag i a zastumas warnezañ eur bern braz a vein, a zo chomet beteg hirio. Ha froudenn Zoue a zistroas diwarnezo. Hag al leh-se a zo bet anvet traonienn Akor, beteg-henn.

VIII. Pennad.

An Izraelited a gemer ar gêr a Hai. Jozue a zav eun aoter.

1. Hogen an Aotrou a lavaras da Jozue ; n'az-pet ket a aon ha na spont ket. Kemer ganez an oll vrezelidi, ha kerz a-eneb kêr Hai ; setu em-eus lakaet etre da zaouarn he roue, hag he fobl, ha kêr, hag ar vro.

2. Hag e ri e-keñver Hai, hag he roue, evel ma eh-eus greet e-keñver Jeriko, hag he roue. Hogen kemeroud a reot evidoh ar preiz hag an oll loened : laka spiou²³⁵ a-dreñv kêr.

3. Jozue a zavas eta, ha gantañ an oll arme, evid kerzoud a-eneb Hai : hag o veza dibabet tregont den kaloneg, e kasas anezo dioh an noz,

4. Hag e hourhemennas dezo : Likit spiou a-dreñv kêr : na bellait ket kalz, ha bezit prest oll :

5. Hogen me, hag ar bobl, ez aim war an tu all da daga kêr. Ha pa zeuint er-mêz en on eneb e tehim, evel ma on-eus greet kent, hag e troim or hein ;

6. Ken n'or-bezo didennet ar re a vezo war ol lerh pelloh dioh kêr ; rag i a gredo penaoz e tehom evel ma on-eus greet kent.

7. Pa dehim eta, ha pa zeuint war ol lerh, c'hwi a zavo euz ho spiou, hag e wastot kêr ; rag an Aotrou ho Toue he lakay etre ho taouarn.

8. Ha pa ho-pezo he hemeret, devit hi, ha grit pep tra evel ma em-eus e hourhemennet deoh.

9. Jozue o hasas kuit, hag i a yeas da leh o spiou ; hag e chomjont etre Betel hag Hai, war-zu ar huz-heol euz a gêr Hai ; hogen Jozue a chomas e-pad an noz-se e-kreiz ar bobl ;

10. Hag antronoz, o sevel a-barz an deiz, e kemeras an niver euz e dud hag en em lakaas gand an henaoured e penn an arme, skozaellet gand al lod brasa euz ar vrezelidi.

²³⁵ spiou : eur spi.

11. Ha pa oent deuet, ha pa oent pignet dirag kêr, eh arzaojont war-zu an hanternoz ; hag eun draonienn a oa etre i ha kêr.

12. Jozue a zilennas ivez pemp mil den, hag a lakaas anezo e spi etre Betel hag Hai, war-zu ar huz-heol euz an heveleb kêr.

13. Hag an dud all euz an arme a gerze, dare d'an emgann, war-zu an hanternoz ; en heveleb doare ma skoe ar re ziweza euz an oll dud-se war an tu euz a guz-heol kêr : Jozue eta o veza kerzet en noz-se a chomas e-kreiz an draonienn.

14. Pa welas kement-se roue Hai, e teuas buan dioh ar mintin er-mêz euz a gêr gand e oll arme, hag e kasas e vrezelidi etrezeg an distro heb gouzoud penaoz ez oa tud e spi a-dreñv dezañ.

15. Hogen Jozue hag Izrael oll a gemeras an teh, oh ober neuz da gaoud aon, hag o kerzoud dre hent an distro.

16. Ha re Hai oh ober eur garm war eun dro, hag oh en em galonekaad an eil egile, a yeas war o lerh. Ha pa oant eet er-mêz euz a gêr,

17. Ha ne oe chomet hini anezo e Hai hag e Retel heb beza eet war-lerh Izrael ; ha ma oant eet en eun taol braz er-mêz, ha ma oa lezet ganto o hêriou digor,

18. An Aotrou a lavaras da Jozue : Sao ar speg a zo en da zorn ouz kêr Hai, rag he rei a rin dit.

19. Ha p'en-doe savet e speg ouz kêr, ar re a oa kuzet e spi a zavas raktal ; hag o kerzoud etrezeg kêr, e kemerjont hag e tevejont anezi.

20. Hogen tud kêr, pere a yee war-lerh Jozue, o veza sellet a-dreñv dezo, hag o weloud ar moged euz a gêr a zave beteg an neñv, ne helljont mui tehi na tu-mañ na tu-hont : dreist-oll pa zeuas ar re o-doa greet neuz da dehi, hag a gerze war-zu an distro, da enebi stard ouz ar re a gerze war o lerh.

21. Jozue hag Izrael oll, o weloud penaoz e oa kemeret kêr, hag e save ar moged anezi, a zistroas war o hiz, hag a wastas tud Hai.

22. En heveleb amzer ar re o-doa kemeret ha devet kêr, o veza eet er-mêz war arbenn d'o zud, a zeraouas skei war an enebourien a oe taget e bep tu ; en heveleb doare n'en em zaveteas hini ebed euz a eun niver ker braz.

23. Kemeroud a rejont ivez ez-veo roue kêr Hai, hag her hasjont da Jozue.

24. Ar re oll eta pere a oa eet war-lerh an Izraelited pa gerzent etrezeg an distro, o veza bet trehet hag eun niver braz anezo o veza bet lazet el leh-se, bugale Izrael en em droas ouz kêr, hag a lazas ar re oll a oa c'hoaz enni.

25. Lazet e eo en deiz-se, ken gwazed, ken merhed, daouzeg mil den pere a oa oll euz a gêr Hai.

26. Hogen Jozue o terhel e speg, ne izellaas ket e zorn en-doa savet d'an neh, ken na oe lazet oll dud Hai.

27. Bugale Izrael a rannas etrezo al loened hag ar preiz euz a gêr, evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet da Jozue.

28. Neuze e tevas kêr, hag e reas anezi eur bez da viken.

29. Lakaad a reas ivez staga ouz ar groug roue Hai, beteg ar pardaez ha beteg kuz-heol. Neuze Jozue a hourhemennas diskenni e gorv maro euz ar groaz : hag e oe taolet e-barz dor kêr, hag e oe lakaet warnezañ eur bern braz a vein, a zo chomet beteg-henn.

30. Neuze Jozue a zavas eun aoter d'an Aotrou, Doue Izrael, war menez Hebal :

31. Evel m'en-doa gourhemennet Moizez, servijer an Aotrou, da vugale Izrael, ha ma eo skrivet e levr lezenn Moizez. An aoter-ze a oa greet gand mein digompez oh pere n'oa ket bet stoket an houarn : hag e kinnigas warnezi sakrifisou-losh, hg e lazas viktimou a beoh.

32. Skriva a reas ivez war mein an Deuteronom lezenn Moizez, en-doa lakaet dirag bugale Izrael.

33. Hogen ar bobl oll, hag an henaoured, an ofiserien, hag ar varnerien a oa en o zav en daou du euz an arh, dirag ar veleien a zouge arh kevredigez an Aotrou, ken an diavêzidi, ken tud ar vro. An hanter anezo a oa e-harz menez Garizim, hag an hanter all e-harz menez Hebal, evel m'en-doa e hourhemennet Moizez, servijer an Aotrou. Ha Jozue a vennigas da genta ar bobl a Izrael.

34. Goude-ze e lennas an oll gomziou a vennoz hag a valloz, ha kement a oa skrivet e levr al lezenn.

35. Ne lezas netra heb e lavaroud, euz a gement en-doa gourhemennet Moizez ; hogen diskoueza a reas a-nevez pep tra dirag oll bobl Izrael, dirag ar merhed, dirag ar vugaligou, ha dirag an diavêzidi a oa deuet da chom en o zouez.

IX. Pennad.

Troidell ar Gabaonited.

1. Pa oe klevet kement-se, an oll roueed euz an tu all euz ar Jourdan pere a chome war ar menezioù hag er hompezennou, en arvorioù, ha war aod ar mor braz ; hag ar re a chome war harz al Liban, an Heteed, hag an Amorreed, hag ar Gananeed, hag ar Ferezeed, hag an Heveed, hag ar Jebuzeed,

2. En em unanas kevred evid stourmi ouz Jozue hag Izrael, gand eun heveleb kalon, hag eun heveleb mennoz.

3. Hogen ar re a chome e Gabaon, o veza klevet kement en-doa greet Jozue e Jeriko hag e Hai :

4. Hag o venna gand troidell, e kemerjont ganto boued, e lekejont seier koz war o ezen, ha bouhkennou²³⁶ roget hag azgwriet ;

5. Koz votou aozet gand peñselioù evid rei dezo eun doare kosoh. Gwisket e oant ivez gand dillad koz ; hag ar baraou a zougent evid boued-hent, a oa kaled, ha torret a-dammou.

6. Dond a rejont da gaoud Jozue, pehini a oa neuze e kamp Galgala, hag e leverjont dezañ kerkoulz ha d'an oll Izrael : Euz a eur vro pell-braz e teuom, gand ar c'hoant da ober ar peoh ganeoh. Ha bugale Izrael a lavaras dezo :

7. Marteze e chomit en douar-mañ a dle beza deom evel ol lodenn, ha neuze ne hellfem ket ober kevredigez ganeoh.

8. Hogen i a lavaras da Jozue : Da zervijerien om. Ha Jozue a lavaras dezo : Piou oh-hu ? Hag a beleh e teuit-hu ?

9. Hag i a lavaras : Da zervijerien a zo deuet euz a eur vro pell-meurbed e ano an Aotrou da Zoue. Rag klevet on-eus ano euz e halloud, euz a gement en-deus greet en Ejipt ;

10. Hag e-keñver daou roue an Amorreed pere a oa en tu all d'ar Jourdan, Sehon, roue Hesebon, hag Og, roue Basan, pehini a oa e Astarot.

11. Hag an henaoured hag oll dud or bro o-deus lavaret deom : Kemerit boued ganeoh en abeg d'an hent hir, hag it war o arbenn, ha livirit dezo : Ho servijerien om, grit kevredigez ganeom.

12. Setu ar baraou on-eus kemeret tomm, pa om eet er-mêz euz on tiez evid dond etrezeg ennoh ; ha bremañ int deuet da veza seh, hag e kouezont a-dammou gand ar gozni.

²³⁶ bouhkennou : seier.

13. Ar bouhkennou-ze a oa nevez pa on-eus lakaet gwin enno ; ha bremañ int roget ha disgwri. Ar saeou a zo warnom, hag ar botou a zo en on treid a zo astud, en abeg d'an hent hir, ha ne dalvont mui netra.

14. An dud a gemeras euz o boued, ha ne houlennjont ket ali an Aotrou.

15. Ha Jozue a roas ar peoh dezo ; ha goude beza bet greet kevredigez ganto, e roas e her dezo penaoz ne vijent ket lazet. Ha priñsed ar bobl a douas ivez an heveleb tra dezo.

16. Hogen a-benn tri deiz goude ma oa greet ar gevredigez, e klevjont penaoz e choment er vro nez, ha penaoz e oant dare d'en em gavoud e-touez o zud.

17. Bugale Izrael o veza savet o hamp, a yeas an trede deiz en o hêriou, a bere ema amañ an anoiou : Gabaon, ha Kafira, ha Berot, ha Kariatiarim.

18. Ha n'o lazjont ket, o veza ma o-doa e douet dezo, priñsed ar bobl, e ano an Aotrou, Doue Izrael. Rag-se an oll bobl a grozas a-eneb ar briñsed.

19. Hag ar re-mañ a lavaras d'ar bobl : Touet on-eus dezo e ano an Aotrou, Doue Izrael ; evel-se ne hellom ket lakaad on dorn warnezo.

20. Hogen setu petra a raim dezo : miret e vezo evid gwir o buhez dezo, gand aon an zeufe da zevel droug en Aotrou en on eneb ma teufem da derri ol le.

21. Hogen beva a raint en heveleb doare, ma trohint ha ma tougint ar heuneud hag an dour a vezo red evid servij an oll bobl.

22. Jozue a halvas ar Gabaonited, hag a lavaras dezo : Perag eo bet fellet deoh on touella gand ho kevier, o lavaroud : Chom a reom pell diouzoh ; pa eo gwir penaoz emaoñ en or hreiz ?

23. Rag-se e viot dindan ar valloz, hag e vezo bepred en ho kouenn tud pere a droho ar heuneud, hag a zougo an dour evid ti va Doue.

24. Hag i a lavaras dezañ : Lavaret e oa bet deom, ni da zervijerien, penaoz en-doa an Aotrou da Zoue roet e her da Voizez, e zervijer, e roje deoh an oll vro-mañ ; hag e kasje da get an oll dud a chom enni. Spontet-braz om bet ; ha gand aon razoh, on-eus kemeret an dezo-ze evid savetei or buhez.

25. Hogen bremañ emaom etre da zaouarn : gra en or heñver ar pezh a gavi mad ha reiz.

26. Jozue a reas eta evel m'en-doa lavaret : o zenna a reas euz a zaouarn bugale Izrael, hag e viras ouz ar re-mañ n'o lazjont.

27. Hag eñ a reizas en deiz-se penaoz e vijent da vevellou d'an oll bobl, ha da aoter an Aotrou ; ha penaoz e trohjont ar heuneud hag e tougjont an dour el leh a vije dilennet gand an Aotrou, evel ma reont c'hoaz beteg-henn.

X. Pennad.

Jozue a laka an heol da arzavi, hag a gemer meur a gêr.

1. Pa glevas Adonisedek, roue Jeruzalem, penaoz en-doa Jozue kemeret ha dismantret ar gêr a Hai (rag greet en-doa e-keñver Hai hag he roue, evel m'en-doa greet e-keñver Jeriko hag he roue) ; ha penaoz en oa en em lakaet ar Gabaonited a-du gand bugale Izrael ; hag o-doa greet kevredigez ganto,

2. E oe spontet-braz. Rag Gabaon a oa eur gêr vraz, hag unan euz a gêriou ar roue, ha brasoh eged ar gêr a Hai ; hag e vrezilidi a oa oll tud euz ar re galoneka.

3. Adonisedek, roue Jeruzalem, a gasas eta etrezeg Ohan, roue Hebron, hag etrezeg Faram, roue Jerimot, hag etrezeg Jafia, roue Lakis, hag etrezeg Dabir, roue Eglon, evid lavaroud dezo :

4. Deuit d'am havoud, ha roit kennerz din, evid ma raim ar brezel d'ar Gabaonited, pere a zo en em lakaet a-du gand Jozue ha gand bugale Izrael.
5. Pemp roue an Amorreed en em zastumas eta kevred, roue Jeruzalem, roue Hebron, roue Jerimot, roue Lakis, roue Egleon : hag e kerzjont gand o oll vrezelidi, hag e lekejont o hamp en-dro da Habaon evid e gronna.
6. Hogen tud Gabaon pa weljont o hêr gronnet, a gasas etrezeg Jozue, pehini a oa neuze e kamp Galgala, evid lavaroud dezañ : Plijet ganez rei da zaouarn da gennerz d'az servijerien : deus buan d'on tenna a boan oh or skoazella ; rag oll roueed an Amorreed pere a chom er menezioù, a zo en em zastumet en on eneb.
7. Jozue a gerzas eta euz a Halgala, ha gantañ ar vrezilidi euz e arme, pere a oa euz ar re galoneka.
8. Hag an Aotrou a lavaras da Jozue : N'az-pezh ket a oan raso ; rag o lakaet emeus etre da zaouarn ; hag hini anezo ne hello enebi ouzit.
9. Jozue eta o veza deuet a-hed an noz euz a Halgala, en em strinkas warnezo en eun taol.
10. Hag an Aotrou a reustlas anezo a-zirag Izrael, hag a skoas warnezo eur gouli braz war harz Gabaon : Jozue a yeas war o lerh dre an hent a bign etrezeg Bethoron, hag e tarhaouas ganto betek Azeka ha Maseda.
11. Ha pa dehent a-raog bugale Izrael, ha ma oant e diskenn Bethoron, an Aotrou a lakaas da goueza mein braz euz an neñv warnezo betek Azeka : ha kalz mui anezo a oe lazeta gand ar vein-ze e doare kazarh, eged gand kleze bugale Izrael.
12. Neuze Jozue a gomzas ouz an Aotrou, en deiz-se e pehini en-doa lakaet an Amorreed etre daouarn bugale Izrael, hag e lavaras dirazo : Heol, na gerz ket etrezeg Gabaon ; na te, loar, war-zu traonienn Ajalon.
13. Hag an heol hag al loar a chomas krenn en eun taol, ken na oe ar bobl en em veñjet euz heh enebourien. Ha ne deo ket skrivet kement-se e levr ar re wirion ? An heol eta a arzavas e-kreiz an neñv, ha ne hastas ket mond da gousked e-pad eun devez.
14. Biskoaz deiz, na kent na goude, ne oe ken hir hag hennez, an Aotrou o veza neuze sentet ouz mouez eun den, hag o veza stourmet evid Izrael.
15. Jozue a zistroas neuze da gamp Galgala gand oll vugale Izrael.
16. Rag ar pemp roue a oa tehet, hag a oa eet da guza en eur heo euz a gêr Maseda.
17. Lavaret e oe da Jozue penaoz tud o-doa kavet ar pemp roue kuzet en eur heo euz a gêr Maseda.
18. Hag eñ a hourhemennas d'ar re a oa gantañ, o lavaroud : Ruillit kerreg braz e genou ar heo, ha likit tud gwen²³⁷ evid miroud ar re a zo serret eno.
19. Hogen c'hwi, na ehanit ket : it war-lerh an enebourien, ha lazit ar re a chomo war-lerh en eur dehou : ha n'o lezint ket da vond dindan gwarez o hêriou, pa en-deus an Aotrou ho Toue o lakaet etre ho taouarn.
20. An enebourien eta o veza bet trehet ha lazeta, heb ma chomas hogos hini, ar re a hellas tehoude euz a zaouarn Izrael en em dennas er hêriou kreñv.
21. Hag an oll arme a zistroas etrezeg Jozue e Masena, e peleh edo neuze ar hamp, hag i yah hag en heveleb niver eged²³⁸ diagent : ha den ne gredas en em zavel a-eneb Izrael.
22. Ha Jozue a hourhemennas, o lavaroud : Digorit genou ar heo, ha degasit dirazon ar pemp roue a zo kuzet ennañ.
23. E dud a reas ar pezh a oa bet gourhemennet dezo : hag e kasjont dirazañ ar roueed a oa er heo, roue Jeruzalem, roue Hebron, roue Jerimot, roue Lakis, roue Eglon.

²³⁷ gwen : ?

²³⁸ eged : ha.

24. Ha pa oent bet degaset dezañ, e halvas oll wazed Izrael, hag e lavaras d'ar re genta euz an arme a oa gantañ : It, ha likit ho troad war gouzoug ar roueed-se. Pa o-doa greet kement-se, ha pa oa o zreid war gouzoug ar re-mañ,

25. Jozue a lavaras c'hoaz dezo : N'ho-pezet ket a aon, ha na spontit ket : kalonekait ha bezit stard, rag evel-se e ray an Aotrou e-keñver hoh oll enebourien ouz pere e rankot stourmi.

26. Ha goude-ze Jozue a skoas gand ar roueed-se hag o lakaas da vervel, hag a lakaas o staga ouz pemp kroug : hag i a chomas krouget eno beteg ar pardaez.

27. Ha pa 'z ee an heol da guza, e hourhemennas d'ar re a oa gantañ m'o diskennjent euz ar groug : ha pa oent bet diskennet ganto, o zeurel a reont er heo, e pehini e oant bet kuzet, hag e lekejont en e henou kerreg braz a zo chomet eno beteg-henn.

28. En heveleb deiz Jozue a gemeras ivez Maseda, hag a zismantras anezi gand ar hleze. Lakaad a reas da vervel he roue, hag ar re oll a chome enni ; ha ne lezas ket enni an disterra den. Ober a reas da roue Maseda evel m'en-doa greet da roue Jeriko.

29. Euz a Vaseda e tremenas gand Izrael oll da Lebna, hag e stourmas outi.

30. Hag an Aotrou a lakaas ar gêr-ze etre daouarn Izrael. Laza a rejont gand ar hleze ar re oll a chome enni ha ne lezjont ket enni an disterra den. Ober a rejont da roue Lebna, evel m'o-doa greet da roue Jeriko.

31. Euz a Lebna e tremenas da Lakis gand Izrael oll : hag o veza lakaet e arme war-dro da gêr, e stourmas outi.

32. Hag an Aotrou a lakaas Lakis etre daouarn Izrael, hag e kemeras anezi an eil devez ; hag e lazas gand ar hleze ar re oll a chome enni, evel m'en-doa greet e Lebna.

33. En heveleb amzer Horam, roue Gazer, a gerzas evid kennerza Lakis : Jozue e drehas, e lazas, hag e oll bobl ganat~~beteg an diweza.

34. Euz a Lakis e tremenas da Eglon, hag e hronnas anezi :

35. Hag e stourmas outi en heveleb deiz : hag e lazas gand ar hleze ar re oll a chome enni, evel m'en-doa greet e Lakis.

36. Pigna a reas goude gand Izrael oll euz a Eglon da Hebron, hag e stourmas outi :

37. He hemeroud a reas, hag e lazas gand ar hleze he roue, ha kement den en em gavas er gêr-ze, hag er hêriou all euz ar vro ; ha ne lezas ket enno an disterra den. Evel m'en-doa greet e Eglon e reas e Hebron ; e beg ar hleze e lazas kement den a gavas enni.

38. Ahano e tistroas etrezeg Dahir :

39. He hemeroud a reas, hag e wastas anezi. Laza a reas gand ar hleze he roue, ha kement den en em gavas er gêr-ze, hag er hêriou all ; ha ne lezas ket enno an disterra den. Evel m'en-doa greet e Hebron hag e Lebna, hag e-keñver o roueed, e reas e Dahir, hag e-keñver he roue.

40. Jozue eta a wastas an oll vro, ken e tu ar menezioù hag ar hreisteiz, ken er gompezenn, hag e Asedot, gand o roueed. Ne lezas ket enno an disterra den ; hogen laza a reas kement en-doa buhez, evel m'en-doa gourhemennet dezañ an Aotrou, Doue Izrael,

41. Adaleg Kadez-barne beteg Gaza. Oll vro Gosen beteg Gabaon

42. A gemeras ivez en eun taol, hag he gwastas, gand e oll roueed hag o douarou ; rag an Aotrou, Doue Izrael, a stourmas evitañ.

43. Ha Jozue a zistroas gand Izrael oll da Halgala e peleh edo e gamp.

XI. Pennad.

Jozue a laka an tan e Asor hag e meur a gêr all.

1. Pa glevas kement-se Jabin, roue Asor, e kasas etrezeg Jobab, roue Madon, hag etrezeg roue Semeron, hag etrezeg roue Aksaf ;
2. Hag etrezeg roueed an hanternoz, pere a chome er menezioù, hag er gompézenn war-zu ar hreisteiz euz a Generet, hag ivez er mêzioù, hag e bro Dor a-hed ar mor :
3. Etrezeg ar Gananeed war-zu ar sav-heol ; hag etrezeg an Amorreed, hag an Heteed, hag ar Ferezeed, hag ar Jebuzeed er menezioù ; hag etrezeg an Heveed, pere a chome e traoñ menez Hermon, e douar Masfa.
4. Dond a rejont oll er-mêz gand o brezilidi, pere a ree eul lod braz-meurbed a dud, evel an trêz a zo war aod ar mor ; hag ivez eun niver braz a gezeg hag a girri.
5. Hag an oll roueed-se en em zastumas war-zu doureier Merom, evid storumi a-eneb Izrael.
6. Neuze an Aotrou a lavaras da Jozue : n'az-pezh ket a aon raso ; rag warhoaz d'an heveleb eur ho likin oll etre da zaouarn, evid beza trehet dirag Izrael. Troha a ri nervennoù divesker o hezeg, hag e tevi o hirri.
7. Jozue a zevas eta en eun taol a-eneb dezo gand e oll arme, hag i en em strinkas warnezañ ;
8. Hag an Aotrou o lakaas etre daouarn bugale Izrael, pere a drehas anezo hag a yeas war o lersh beteg Sidon ar vraz, beteg doureier Maserefot, ha beteg mêzioù Masfa a zo war-zu ar sav-heol anezi. Evel-se Jozue o lazas oll, heb ma chomas an disterra anezo.
9. Ober a reas ar pezh en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ : troha a reas nervennoù divesker o hezeg, hag e tevas o hirri.
10. Hag o veza distroet raktal, e kemeras Asor, hag e lazas he roue gand ar hleze. Hag Asor a oa bet a beb amzer ar genta hag ar penn-kêr euz an oll rouanteleziou-ze.
11. Laza a reas ar re oll a chome er gêr-ze : gwasta a reas oll, ha ne lezas ket enni an disterra den ; hag ar gêr heh-unan a zismantras gand an tan.
12. Kemeroud a reas ivez hag e wastas an oll gêrioù tro-war-dro, hag e lazas o roueed, evel m'en-doa e hourhemennet dezañ Moizez, servijer an Aotrou.
13. Izrael a zevas an oll gêrioù, nemed ar re en em gave war ar hreioù ha war an torgennou. Ne oe devet euz ar re-mañ nemed Asor, o veza ma oa kreñv-braz.
14. Bugale Izrael a rannas etrezo an oll breiz, ha loened ar hêrioù-ze, goude beza lazetañ an oll dud a oa enno.
15. Evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet da Voizez, e zervijer, evel-se e hourhemennas ivez Moizez da Jozue ; hag hemañ o zevas oll ; ne dremenas dreist hini ebed euz a hourhemennou an Aotrou da Voizez.
16. Jozue a gemeras eta an oll vro euz ar menezioù hag euz ar hreisteiz, douar Gosen, hag ar gompézenn, hag an douar a oa ouz ar huz-heol, ha menez Izrael hag e vêzioù :
17. Ha lod euz ar menez a zav etrezeg Seir beteg Baalgad, a-hed kompezenn al Liban, a-iz menez Hermon. Kemeroud a reas o oll roueed ; skei a reas ganto hag o lazas.
18. E-pad eun amzer hir e stourmas Jozue ouz ar roueed-se.
19. Ne oa kêr ebed a gement en em roas da vugale Izrael, nemed an Heveed, pere a chome e Gabaon : hag oll e kemeras o stourmi.
20. Rag youl Doue e oa bet e teuje o halonou da galedi, e stourmjent a-eneb Izrael, e vijent diskaret, ne zellezjent trugarez ebed, hag e teujent da get, evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet da Voizez.

21. En amzer-ze e kerzas Jozue ouz al langouineien, e lazaz anezo, hag o dispennas er meneziou, e Hebron, e Dahir, hag e Anab, hag e oll venez Juda hag Izrael ; hag e tiskaras o oll gêriou.

22. Ne lezas hini ebed a ouenn al langouineien e douar bugale Izrael, nemed e kêriou Gaza, ha Get, hag Azot, e pere hepken e lezas euz anezo.

23. Jozue a gemeras eta ar vro oll, evel m'en-doa lavaret an Aotrou da Voizez ; hag e roas anezi e kerz da vugale Izrael, hervez o lodennou hag o breuriezou : hag ar brezel a ehanas er vro.

XII. Pennad.

Anoiou ar roueed a zo bet trehet gand Jozue.

1. Setu amañ ar roueed a zo bet trehet gand bugale Izrael, hag a bere o-doe ar vro en tu all d'ar Jourdan, war-zu ar sav-heol, adaleg froud Araon beteg menez Hermon, hag oll zaouar ar sav-heol a zell ouz an distro.

2. Schon, roue an Amorreed, pehini a chome e Hesebon, hag a rene adaleg Aroer a zo diazezet war glann froud Arnon, hag adaleg kreiz an draonienn, hag an hanter euz a Halaad, beteg froud Jakob, a zo war harzou bugale Ammon ;

3. Hag adaleg an distro beteg mor Keneret, war-zu ar sav-heol, ha beteg mor an distro, pehini eo ar mor sall-meurbed, war-zu douar ar sav-heol, a-hed an hent a gas da Vetsimot, hag adaleg tu ar hreisteiz, a-iz da Asedot, beteg Fasga.

4. Harzou Og, roue Basan, euz ar re a chome euz a-douez al langouineien, ha pehini a chome e Astorot hag e Edrai, en em astenne adaleg menez Hermon, hag adaleg Salec'ha, hag oll zaouar Basan, beteg harzou

5. Gelluri, ha Mac'hati, hag an hanter euz a Halaad, pere a oa harzou Schon, roue Hesebon.

6. Moizez, servijer an Aotrou, ha bugale Izrael, a drehas anezo : ha Moizez a roas o bro e kerz d'ar Rubenied, d'ar Hadied ha da hanter-vreuriez Manase.

7. Setu amañ ar roueed a drehas Jozue ha bugale Izrael er vro en tu all d'ar Jourdan, war-zu douar ar huz-heol, adaleg Baalgad e mêz al Liban, beteg ar menez a zav etrezeg Seir. Ha Jozue a roas o bro e kerz da vreuriezou Izrael, da bep hini he lod,

8. Kerkoulz er meneziou, hag er hompezennou, hag er mêziou. An Heteed, hag an Amorreed, ar Hananeed hag ar Ferezeed, an Heveed hag ar Jebuzeed a chome e Asedot, hag en distro, ha war-zu ar hreisteiz.

9. Bez' e oa eur roue Jeriko, eur roue Hai, a zo war harz Betel,

10. Eur roue Jeruzalem, eur roue Hebron,

11. Eur roue Jerimot, eur roue Lakiz, eur roue Heglon, eur roue Gazer,

12. Eur roue Heglon, eur roue Gazer,

13. Eur roue Dabir, eur roue Gader,

14. Eur roue Herma, eur roue Hered,

15. Eur roue Lebna, eur roue Odullam,

16. Eur roue Maseda, eur roue Betel,

17. Eur roue Tafua, eur roue Ofer,

18. Eur roue Afek, eur roue Saron,

19. Eur roue Madon, eur roue Asor,

20. Eur roue Semeron, eur roue Aksaf,

21. Eur roue Tenak, eur roue Mageddo,

22. Eur roue Kadez, eur roue Jakanan euz ar Harmel,

23. Eur roue Dor, hag euz a broviñs Dor, eur roue a vroadou Galgal,

24. Eur roue Tera : en oll eur roue ha tregont.

XIII. Pennad.

Doue a hourhemenn da Jozue ober al lodennou euz ar vro gemeret.

1. Jozue a oa koz, hag hirholaet, hag an Aotrou a lavaras dezañ : Koz out hag hirhoalet, hag e chom eur vro vraz-meurbed, ha n'eo ket c'hoaz lodennet dre ar sort :
2. Da houzoud eo an oll Halilea, bro ar Filistined, hag oll zouar Gesuri ;
3. Adaleg an dour teñval, a zoura an Ejipt, beteg harzou Akaron, etrezeg an hanternoz : douar Kanaan, pehini a zo rannet etre ar pemp priñs euz ar Filistined, hini Gaza, hini Azot, hini Askalon, hini Get, hag hini Akaron.
4. War-zu ar hreisteiz ema an Heveed, oll zouar Kanaan, ha Maara ar Sidonied, beteg Afek, ha beteg hazrou an Amorreed,
5. Hag an douarou nez : hag ivez bro al Liban, war-zu ar sav-heol, adaleg Baalgad, a-iz menez Hermon, beteg ma'z eer e Emai,
6. Ar re oll a chom war ar menez, adaleg al Liban beteg doureier Maserefot, hag an oll Zidonied. me eo o bevez euz a-zirag bugale Izrael. Ra zeuy eta ar broiou-ze e lodenn degouez Izrael evel ma em-eus e hourhemennet dit.
7. Ha bremañ rann an douar a dle beza e kerz an nao breuriez, hag an hanter euz breuriez Manase ;
8. Gand pehini Ruben ha Gad o-deus bet an douar en-deus roet dezo Moizez, servijer an Aotrou, en tu all d'ar Jourdan, war-zu ar sav-heol ;
9. Adaleg Aroer, pehini a zo war glann froud Arnon, hag e-kreiz an draonienn, hag oll vèziou Medaba, beteg Dibon ;
10. Hag oll gêriou Sehon, roue an Amorreed, pehini a rene e Hesebon, beteg harzou bugale Ammon :
11. Ha Galaad, hag harzou Gesuri ha Mac'hati, hag oll venez Hermon, hag oll Vasan, beteg Saleka :
12. Oll rouantelez Og e Basan, pehini a rene e Astarot hag e Edrai, hag a oa euz ar re a chome euz a-douez al langouineien : Moizez a drehas ar poblou-ze, hag o hasas da get.
13. Ha ne fellas ket da vugale Izrael kolla tud Gesuri ha Manac'hti : hag i a zo chomet e-kreiz Izrael bete-vremañ.
14. Hogen Moizez ne roas ket a zouar e kerz da vreuriez Levi ; rag sakrifisou ha viktimou an Aotrou, Doue Izrael, a zo he degouez, evel ma en-deus e lavaret dezañ.
15. Moizez a roas eta douar e kerz da vreuriez Ruben, hervez he herentiezou.
16. Hag o harzou a oe adaleg Aroer a zo war glann froud Arnon, hag e-kreiz an draonienn e pehini ema ar froud-se ; hag an oll gompzenn a gas da Vedaba,
17. Ha da Hesebon, hag o oll vourhiou, a zo er menezioù ; ha Dibon, ha Bamot-baal, ha kêr-vrezel Baalmaon,
18. Ha Jasa, ha Kedimot, ha Mefaat,
19. Ha Kariataim, ha Sabama, ha Saratasar e menez an draonienn,
20. Ha Betfegor, hag Asedot, ha Fasga, ha Betjesimot ;
21. Hag oll gêriou ar gompzenn, hag oll rouanteleziou Sehon, roue an Amorreed, a rene e Hesebon, a drehas Moizez gand priñsed Madian, hag Hevi, ha Rekem, ha Sur, hag Hur, ha Rebe, pere a oa pennou braz Sehon a chome er vro.
22. Bugale Izrael a lazas ivez gand ar hleze Balaam, mab Beor, an diouganer, gand ar re all a oe lazet.

23. Hag harzou bro bugale Ruben a oe ar ster Jourdan. Setu kerz mibien Ruben, o hêriou hag o bourhiou hervez o herentiezou.

24. Moizez a roas ivez e kerz da vreuriez Gad ha d'e vugale hervez o herentiezou, an douar a behini ema amañ ar rann ;

25. Harzou Jazer, hag oll gêriou Galaad, hag an hanter euz a zouar bugale Ammon, beteg Aroer, pehini a zo rag-eneb da Rabba ;

26. Hag adaleg Hesebon beteg Ramot, Masfe ha Betonim ; hag adaleg Manaim beteg harzou Dabir ;

27. Hag e traonienn Betaran, al lodenn all euz a rouantelez Sehon, roue Hesebon : harzou hemañ eo ivez ar Jourdan, beteg ar penn pella euz a vro Keneret, en tu all d'ar Jourdan, war-zu ar sav-heol.

28. Setu kerz bugale Gad, o hêriou hag o bourhiou, hervez o herentiezou.

29. Moizez a roas ivez e kerz da hanter-vreuriez Manase ha d'e vugale, hervez o herentiezou, an douar

30. A behini ema amañ ar penn : a Vanaim oll Vasan, hag oll rouanteleziou Og, roue Basan, hag oll vourhiou Jair, a zo e Basan, tri-ugent kêr ;

31. Hag an hanter euz a Halaad, hag euz a Astarot, hag euz a Edrai, kêriou euz a rouantelez Og e Basan : da vugale Mac'hîr, mab Manase, da lavaroud eo, d'an hanter euz a vugale Mac'hîr, hervez o herentiezou.

32. Moizez a rannas evel-se an douar e kompezenn Moab en tu all d'ar Jourdan, rag-eneb da Jeriko, war-zu ar sav-heol.

33. Hogen ne roas ket a zouar e kerz da vreuriez Levi : o veza ma eo an Aotrou, Doue Izrael, e-unan e gerz, hervez ma en-deus lavaret dezañ.

XIV. Pennad.

Jozue a ro Hebron e kerz da Galeb.

40. Setu amañ petra o-deus bet en o herz bugale Izrael e douar Kanaan, a zo bet roet dezo gand Eleazar, ar beleg-braz, ha Jozue, mab Nun, ha priñsed ar herentiezou euz a beb breuriez euz a Izrael :

41. Goude beza rannet pep tra dre ar sort, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou dre zorn Moizez, etre an nao breuriez hag an hanter euz a vreuriez Manase.

42. Rag Moizez en-doa roet d'an diou vreuriez all ha d'an hanter euz a vreuriez Manase douarou e kerz en tu all d'ar Jourdan, heb niveri al Levited, pere n'o-doa ket a zouar evel o breudeur :

43. Hogen mibien Jozef, Manase hag Efraim, rannet e diou vreuriez, o-doe degouez en o leh ; hag al Levited n'o-doe lod all ebed e douar Kanaan, nemed kêriou evid chom enno gand o fabourziou evid maga o hezeg hag o zaout.

44. Bugale Izrael a reas evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet da Voizez, hag e rannjont an douar.

45. Neuze mibien Juda a zeuas da gavoud Jozue e Galgala : ha Kaleb, mab Jefone ar Henezead, a gomzas outañ evel-henn : Te a oar petra en-deus lavaret an Aotrou e Kadez-barne da Voizez, an den Doue, diwar va fenn ha diwar da hini.

46. Daou-ugent vloaz 'oan pa oen kaset gand Moizez, servijer an Aotrou, euz a Gades-barne, evid anaoud an douar ; ha me a zisklêrias dezañ ar pez a oa gwir war va mennoz.

47. Hogen va breudeur pere a oa deuet ganen a zigalonekaas ar bobl : ha koulskoude eh heuillis an Aotrou va Doue.

48. Ha Moizez en deiz-se a douas, o lavaroud : An douar ma'z out kerzet warnezañ, a vezo e kerz dit, ha d'az pugale da viken, o veza ma eh-eus heuliet an Aotrou da Zoue.

49. An Aotrou en-deus va miret beteg-henn, evel m'en-doa e ouestlet. Pemp bloaz ha daou-ugent 'zo abaoe ma lavaras an Aotrou kement-se da Voizez, pa gerze Izrael en distro : pemp bloaz ha pevar-ugent on bremañ ;

50. Ha ker kreñv on ha ma oan en amzer ma oen kaset evid anaoud ar vro : an nerz em-boa neuze a zo chomet ganen beteg hirio, hag evid brezelekaad, hag evid kerzoud.

51. Ro din eta ar menez-se en-deus gouestlet an Aotrou din, evel ma eh-eus e glevet da-unan, war behini ez eus langouineien, ha kêriou braz ha kreñv, ma welin mar dema an Aotrou ganen²³⁹, ha ma hellin o has da get, evel ma en-deus e ouestlet din.

52. Ha Jozue a vennigas anezañ ; hag e roas dezañ Hebron e kerz.

53. Hag abaoe neuze Hebron a zo bet da Galeb, mab Jefone ar Henezead, bete-vremañ, o veza ma heulias an Aotrou, Doue Izrael.

54. Hebreon a oa anvet kent Kariat-arbe, en abeg da eun den braz-meurbed e-touez al langouineien a zo bet beziet ano. Hag ar brezel a ehanas neuze er vro.

XV. Pennad.

Douar ha kêriou breuriez Juda.

1. Setu al lodenn a roas ar sort da vugale Juda, hervez o herentiezou : adaleg harzou Edom, distro Sin, war-zu ar hreisteiz, beteg ar penn pella euz a zouar ar hreisteiz.

(Pelloc'h n'eus nemed anoiou kêriou a zo bet roet da vreuriez Juda.)

XVI. Pennad.

Lodenn Efraim.

(Pelloc'h n'eus nemed anoiou kêriou a zo bet roet da vreuriez Juda.)

XVII. Pennad.

Lodenn Manase.

(Pelloc'h n'eus nemed anoiou kêriou a zo bet roet da vreuriez Juda.)

XVIII. Pennad.

Lodenn Benjamin.

(Pelloc'h n'eus nemed anoiou kêriou a zo bet roet da vreuriez Juda.)

²³⁹ mar dema an Aotrou ganen : hag eñ ema an Aotrou ganen.

XIX. Pennad.

Lodenn Simeon, Zabulon ; Isakar, Aser, Neftali, Dan ha Jozue.

(Pelloc'h n'eus nemed anoiou kêriou a zo bet roet da vreuriez Juda.)

XX. Pennad.

Kêriou menehi²⁴⁰.

1. Neuze an Aotrou a gomzas ouz Jozue, o lavaroud : Komz ouz bugale Izrael, ha lavar dezo :
2. Rannit kêriou an deherien, a bere em-eus komzet deoh dre henou Moizez,
3. Evid ma teho enno neb en-devezo lazet eun den heb gouzoud dezañ, ha ma hello pellaad dioc buanegez ar har nesa pehini eo veñjer ar gwad,
4. Ha pa vezo tehet en unan euz ar hêriou-ze, en em lakay e-tal dor gêr, hag e lavaro da henaoured ar gêr-ze kement a hello rei da anaoud ez eo dinamm : hag evel-se e tegemerint anezañ hag e roint dezañ eul leh evid chom.
5. Ha mar deu veñjer ar gwad war e lerh, na likint ket anezañ etre e zaouarn ; o veza ma en-deus lazet e nesa heb gouzoud dezañ, ha n'eo ket anad e ve bet enebour dezañ daou pe dri devez kent.
6. Hag eñ a chomo er gêr-ze, ken na vezo en em ziskouezet dirag ar varnerien, ha ma en-devezo disklêriet an abeg euz e ober, ha ken na vezo maro ar Beleg-braz a oa en amzer-ze. Neuze al lazer a zistroy hag a yelo en e gêr hag en e di, a beleh e oa tehet.
7. Hag i a verkas Sedez war menez Neftali e Galilea, ha Sicheem war menez Efraim ; ha Kariarahe, a zo ivez Hebron, war menez Juda.
8. Hag en tu all d'ar Jourdan, war-zu ar sav-heol euz a Jeriko, e verkjont Bosor, a zo e kompezenn an distro, euz a vreuriez Ruben, ha Ramot e Galaad, euz a vreuriez Gad, ha Gaulon e Basan, euz a vreuriez Manase.
9. Ar hêriou-ze a oe lakaet evid oll vugale Izrael, hag evid an diavêzidi a chome en o zouez : evid ma tehje enno neb en-dije lazet eun den heb gouzoud dezañ, hag evid na vije ket lazet eñ gand dorn ar har-nes a fellfe dezañ veñji ar gwad skuillet, ken na hellje sevel dirag ar bobl evid en em zidamalloud euz e dorfed.

XXI. Pennad.

Al Levited a houlenñ kêriou evito.

1. Neuze priñsed kerentiezou Levi a zeuas da gavoud Eleazar, ar Beleg-braz, ha Jozue, mab Nun, ha priñsed ar herentiezou euz a beb breuriez euz a vugale Izrael ;
2. Hag e komzjont outo e Silo, e bro Kanaan, hag e leverjont dezo : An Aotrou en-deus gourhemennet dre henou Moizez, e vije roet deom kêriou evid chom enno, hag o fabourziou evid maga ol loened.
3. Ha bugale Izrael a roas euz o degoueziou, hervez gourhemenn an Aotrou, kêriou hag o fabourziou.
4. Hag ar sort o veza bet taolet evid kerentiez Kaat, trizeg kêr euz a vreuriez Juda, ha Simeon, ha Benjamin, a zegouezas da vugale Aaron ;

²⁴⁰ menehi : ? Sañset "repuidi".

5. Ha da vugale all Kaat, da lavaroud eo, d'al Levited all, deg kêr euz a vreuriezou Efraim ha Dan, hag hanter-vreuriez Manase.

6. Hag ar sort o veza bet taolet evid bugale Gerson, e tegouezas dezo trizeg kêr euz a vreuriezou Isakar, hag Aser, ha Neftali, hag an hanter-vreuriez euz a Vanase e Basan.

7. Ha da vugale Merari hervez o herentiezou, daouzeg kêr euz a vreuriez Ruben, ha Gad, ha Zabulon.

8. Bugale Izrael a roas d'al Levited ar hêriou-ze hag o fabourziou, evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou dre henou Moizez, o rei da bep hini dioh ma oa kouezet ar sort.

9. Jozue a roas dezo kêriou euz a vreuriezou bugale Juda ha Simeon, a bere ema amañ o anoioù :

10. Da vugale Aaron dre gerentiezou Kaat euz a ouenn Levi (rag al lodenn genta a zegouezas dezo gand ar sort),

11. (*da 43 : Kêriou bet roet da veur a vreuriez.*)

XXII. Pennad.

Aoter savet war aod ar Jourdan.

1. En heveleb amzer Jozue a halvas breuriezou Ruben ha Gad, hag hanter-vreuriez Manase,

2. Hag a lavaras dezo : Greet hoh-eus kement en-doa gourhemennet deoh Moizez, servijer an Aotrou : sentet hoh-eus ivez ouzin e pep tra ;

3. Ha n'hoh-eus ket dilezet ho preudeur e-pad eun hir amzer, bete-vremañ, o viroud gourhemenn an Aotrou ho Toue.

4. Pa en-deus eta an Aotrou ho Toue roet d'ho preudeur an ehan hag ar peoh, evel m'en-doa e lavaret, distroit, hag it d'ho teltou ; ha d'an douar euz ho kerz, en-deus roet deoh Moizez, servijer an Aotrou, en tu all d'ar Jourdan.

5. Hogen hepken mirit gand preder, ha sevenit evid gwir ar gelenn hag al lezenn en-deus gourhemennet Moizez, servijer an Aotrou, ma kerot an Aotrou ho Toue, ha ma kerzot en e heñchou, ha ma virot e hourhemennou, ha ma en em stagot outañ, ha ma servijot anezañ gand hoh oll galon, ha gand hoh oll ene.

6. Neuze Jozue a vennigas anezo hag o hasas kuit. Hag i a zistroas d'o zeltou.

7. Hogen Moizez en-doa roet da hanter-vreuriez Manase e gerz e Basan : ha Jozue en-doa roet d'an hanter-vreuriez all e lodenn e-touez e vreudeur all en tu all d'ar Jourdan war-zu ar huz-heol. Pa o hasas Jozue d'o zeltou, ha goude m'en-doe o benniget,

8. E lavaras dezo : Distrei a rit d'ho kêriou gand kalz a zanvez hag a vadou, gand arhant, hag aour, hag arem, hag houarn, ha kalz a zillad : rannit preiz an enebourien gand ho preudeur.

9. Bugale Ruben ha bugale Gad hag hanter-vreuriez Manase a zistroas eta, hag a yeas kuit dioh bugale Izrael e Silo, pehini a zo e Kanaan, evid mond da Halaad, douar o degouez, a oa bet roet dezo gand Moizez, hervez gourhemenn an Aotrou.

10. Ha pa oent deuet da uhelennou ar Jourdan e douar Kanaan, e savjont e-tal ar Jourdan eun aoter vraz-meurbed.

11. Pa glevas bugale Izrael kement-se, ha pa oe bet kemennet dezo evel gwir penaoz bugale Ruben ha bugale Gad hag hanter-vreuriez Manase o-doa savet eun aoter e douar Kanaan, war uhelennou ar Jourdan, rag-eneb da vugale Izrael :

12. En em zastumjont oll e Silo, evid pigna ha stourmi outo,

13. Ha koulskoude e kasjont etrezeg enno da vro Halaad, Fineez, mab Eleazar ar Beleg-braz,

14. Ha deg priñs gantañ, unan euz a beb breuriez ;

15. Pere a zeuas da gavoud bugale Ruben ha Gad, hag hanter-vreuriez Manase, e bro Halaad, hag a lavaras dezo :

16. Setu petra a gemenn oll bobl an Aotrou : Petra eo ar fallagriez-se ? Perag hoh-eus-hu dilezet an Aotrou, Doue Izrael, o sevel eun aoter zaotret, hag oh en em denna euz e gaelidigez ?

17. Ha nebeud eo deoh beza pehet e Beelfegor, ha ma eo chomet bete-vremañ an namm euz ar fallagriez-se warnom, goude ar holl euz a gement a bobl ?

18. Ha c’hwi a zilez hirio an Aotrou, ha warhoaz e vuaneged a darzo war Izrael oll.

19. Mar kredit penaoz eo dihlan douar ho lodenn, tremenit d’an douar e pehini ema tabernakl an Aotrou, ha chomit en on touez : gand n’en em rannot ket dioh an Aotrou, ha dioh or hevredigez, o sevel eun aoter ha na vezo ket aoter an Aotrou, on Doue.

20. Pa dorras Akan, mab Zare, gourhemenn an Aotrou, ha na gouezas ket buanegez an Aotrou war oll bobl Izrael ? Ne oa eñ nemed eun den, hag a-youl e vije bet kollet e-unan goude e fallagriez ?

21. Bugale Ruben ha Gad, hag hanter-vreuriez Manase a lavaras d’ar briñsed a oa bet dilennet gand Izrael :

22. An Aotrou Doue kreñv-meurbed, an Aotrou Doue kreñv-meurbed a anavez or mennoz, hag Izrael e anavezo ivez. Ma on-eus savet an aoter-ze dre eur mennoz a wallerez, na skoazellet ket ahanom, hogen kastizet ahanom raktal.

23. Ma on-eus e hreet gand an dezo da ginniga warnezi sakrifisou, ha sakrifisou-losk, hag ostivou a beoh, ra enklasko ha ra varno Doue e-unan,

24. Ma n’eo ket deuet en or spered al lavar-mañ : eun deiz da zond ho pugale a lavaro d’or bugale : Pe gevredigez a zo etre c’hwi hag Aotrou Doue Izrael ?

25. Evel harzou en-deus lakaet an Aotrou ster ar Jourdan etre ni ha c’hwi, o ! bugale Ruben ha bugale Gad : ha dre ze n’hoh-eus ket a lodenn en Aotrou. Ha dre an abeg-se ho pugale a zistrofe or bugale euz a zoujañs an Aotrou. Mennet on-eus eta e oa gwelloc’h evel-se,

26. Hag on-eus lavaret : Savom eun aoter, nann evid kinniga warnezi sakrifisou hag ostivou a beoh,

27. Hogen evid ma vezo da desteni etre ni ha c’hwi, hag etre or bugale hag ho re, penaoz e servijom an Aotrou, hag on-eus gwir da ginniga dezañ sakrifisou-losk, ha viktimou, hag ostivou a beoh : hag evid na lavaro ket en amzer-da-zond ho pugale d’or bugale : N’hoh-eus ket a lodenn en Aotrou.

28. Mar fell dezo lavaroud evel-se, e livirint dezañ : Setu aoter an Aotrou, o-deus savet on tadou, nann evid kinniga sakrifisou, na sakrifisou-losk, hogen evid ma vezo da desteni etre ni ha c’hwi.

29. Doue r’on miro dioh ar gwall-ze, ma en em dennjem dioh an Aotrou, ha mar dilezjem e heulio o sevel eun aoter evid kinniga warnezi sakrifisou, ha sakrifisou-losk, ha viktimou, nemed war aoter an Aotrou on Doue, a zo bet savet dirag e dabernakl.

30. Pa glevas Fineez kement-se, hag ar briñsed a oa gantañ hag a oa bet dileuret gand Izrael, eh habaskajont : hag e oe da dezo klevoud komziou bugale Ruben ha Gad, hag hanter-vreuriez Manase.

31. Ha Fineez, ar beleg, mab Eleazar, a lavaras dezo : Gouzoud a reom bremañ penaoz ema an Aotrou ganeom, pa emao dinamm euz ar fallagriez-se, hag hoh-eus tennet bugale Izrael euz a zorn an Aotrou,

32. Hag eñ a zistroas gand ar briñsed dioh bugale Ruben ha Gad, euz a zouar Galaad, da harzou Kanaan, etrezeg bugale Izrael, hag e reas e zanevell dezo.

33. E lavar a oe hetuz d'ar re oll e glevas. Ha bugale Izrael a veulas Doue, ha biskoaz mui ne vennjont mond en eneb d'o breudeur, evid stourmi outo, hag evid gwasta an douar o-doa en o herz.

34. Ha bugale Ruben ha bugale Gad a halvas an aoter o-doa savet, aoter on testeni ez eo an Aotrou, Doue e-unan hepken.

XXIII. Pennad.

Jozue a gomz ouz ar bobl.

1. Goude ma oe tremenet kalz a amzer, abaoe m'en-doa an Aotrou roet ar peoh da Izrael, ha lakaet an oll vroadou da blega dindannañ, ha Jozue o veza dija koz hag hir-hoalet ;

2. Jozue a halvas Izrael, hag an henaoured, hag ar briñsed, hag ar pennou braz, hag ar varnerien, hag a lavaras dezo : Koz on, hag hir-hoalet.

3. C'hwi a wel kement en-deus greet an Aotrou ho Toue d'an oll vroadou tro-war-dro, e pe zoare en-deus e-unan stourmet evidoh :

4. Ha penaoz en-deus lodenent dre ar sort an oll zouar-mañ, adaleg tud ar huz-heol euz ar Jourdan beteg ar mor braz, petra bennag ma chom c'hoaz kalz a vroadou :

5. An Aotrou ho Toue o hollo hag o haso da get dirazoh, hag e perhennot an douar-ze, evel ma en-deus e douet deoh.

6. Koulskoude en em greñvait, ha mirit gand preder kement a zo skrivet e levr lezenn Moizez : ha na zistroit dioutañ nag a-zehou nag a-gleiz ;

7. Gand aon, goude ma viot eet e douar ar broadou-ze, pere a vezo en ho touez, ne zeufeh ket da doui e ano o doueed, d'o zervija ha d'o azeuli :

8. Hogen ma en em stagot ouz an Aotrou ho Toue, evel ma hoh-eus e hreet betevremañ.

9. Ha neuze an Aotrou Doue a lamo dirazoh ar broadou-ze braz ha galloudeg, hag hini ne hello enebi ouzoh.

10. Unan ahanoh hepken a yelo war-lerh mil den euz hoh enebourien, o veza ma stourmo an Aotrou ho Toue e-unan evidoh, evel ma en-deus e douet.

11. Likit evez mad hepken ma kerot an Aotrou ho Toue.

12. Mar fell deoh en em staga ouz faziou ar broadou-ze a chom en ho touez, hag en em gemmeski ganto gand dimeziou, hag en em unani ganto gand karanteziou :

13. Guezit a-vremañ penaoz an Aotrou ho Toue n'o lamo ket a-zirazoh, hogen ma teuint deoh da roued ha da lindag, ha da vroud ouz ho kostez, ha da zrein en ho taoulagad, ken n'en-devezo ho lamet hag ho kollet diwar an douar mad-meurbed-mañ en-deus roet deoh.

14. Setu emañ dare hirio da vond e hent an douar oll ; ha c'hwi a oar gand peb anaoudegez penaoz euz a gement ger en-deus touet an Aotrou e roje deoh, n'eus tremenet hini ebed heb beza bet sevenet.

15. Evel eta ma en-deus sevenet kement en-doa touet deoh, ha ma eo deuet pep tra da vad ; evel-se e tegaso warnoh an oll reuziou a bere en-deus ho kourdrouzet, ken n'en-devezo ho lamet hag ho kollet diwar an douar mad-meurbed-mañ en-deus roet deoh ;

16. O veza ma ho-pezo torret ar gevredigez en-doa greet an Aotrou, ho Toue, ganeoh, ma ho-pezo servijet hag azeulet doueed a-ziavêz ; ha raktal e savo buanegez

an Aotrou ouzoh hag e viot lamet diwar an douar mad-meurbed-mañ en-deus roet deoh.

XXIV. Pennad.

Kevredigez ar bobl gand an Aotrou. Maro Jozue hag Eleazar ar Beleg-braz.

1. Ha Jozue a zastumas oll vreuriezhou Izrael e Sicheim, hag a halvas an henaoured, hag ar briñsed, hag ar varnerien, hag ar pennou-kêr ; hag ar re-mañ a chomas en o zav dirag an Aotrou ;

2. Hag eñ a gomzas evel-henn ouz ar bobl : Setu petra a lavar an Aotrou, Doue Izrael : Ho Tadou, Tare, tad Abraham, ha Nakor, a zo bet o chom en tu all d'ar ster er penn kenta : hag i o-deus servijet doueed a-ziavêz.

3. Tenna a ris eta ho tad Abraham euz a harzou ar V/Mezopotamia, hag e kasis anezañ e douar Kanaan ; hag e kreskis e ouenn :

4. Hag e rois dezañ Izaak : ha da Izaak e rois Jakob hag Ezan. Da Ezan e rois menez Seir e kerz ; hogen Jakob hag e vugale a ziskennas d'an Ejipt.

5. Kas a ris Moizez hag Aaron, hag e skois an Ejipt gand kalz a aroueziou hag a vurzudou.

6. Ha me ho tennas euz an Ejipt, c'hwi hag ho tadou, hag e teujot etrezeg ar mor : hag an Ejiptianed a yeas war-lerh ho tadou gand kirri ha marheien, beteg ar mor Ruz.

7. Hogen bugale Izrael a harmas ouz an Aotrou, pehini a lakaas teñvalijenn etre c'hwi hag an Ejiptianed, hag a zegasas ar mor warnezo, hag a holoas anezo. Ho taoulagad o-deus gwelet kement em-eus greet en Ejipt, hag oh chomet pell amzer en distro ;

8. Hag ho lakaet em-eus da vond e douar an Amorreed, pere a chome en tu all d'ar Jourdan. Ha pa stourment ouzoh, me em-eus o lakaet etre ho taouarn ; hag oh deuet da veza perhenn en o douar, goude beza o lazet.

9. Hogen Balak, mab Sefor, roue Moab, a zavas hag a stourmas ouz Izrael. Hag eñ a gasas Balaam, mab Beor, evid ho milliga.

10. Ha ne fellas ket din e zelaoui, hogen en eneb e vennigis ahanoh drezañ, hag ho tennis euz e zaouarn.

11. Treuzi a rejot ar Jourdan, hag e teujot da Jeriko, ha tud ar gêr-ze a stourmas ouzoh, an Amorreed, hag ar Ferezeed, hag ar Gananeed, hag an Heteed, hag ar Gerjeseed, hag an Heveed, hag ar Jebuzeed ; he ma o lakaas etre ho taouarn.

12. Hag e kasis en ho raog sardoned, hag e taolis anezo euz o bro, da lavaroud eo daou roue d'an Amorreed, nann dre ho kleze, na dre ho kwareg.

13. Ha me a roas deoh eun douar, pehini n'ho-poa ket labouret, ha kêriou ha n'ho-poa ket savet, evid chom enno, gwini hag olived ha n'ho-poa ket plantet.

14. Doujit eta bremañ an Aotrou, ha servijit anezañ gand eur galon glok ha gwirion : lamit an doueed o-deus servijet ho tadou er V/Mezopotamia hag en Ejipt, ha servijit an Aotrou.

15. Hogen mar gwelit e ve droug deoh servija an Aotrou, eo roet ar hemm deoh ; dilennit hirio ar pez a blijo ganeoh ; petra eo gwell deoh da zervija, pe an doueed o-deus servijet ho tadou er V/Mezopotamia, pe doueed an Amorreed, e bro pere e chomit : hogen evidon ha va zi e servijim an Aotrou.

16. Hag ar bobl a respontas hag a lavaras : Doue ra viro ma tilezim an Aotrou, ha ma servijim doueed a-ziavêz.

17. An Aotrou on Doue eo en-deus e-unan on tennet, ni hag on tadou, euz a zouar an Ejipt, euz a vro ar sklaverez : ha greet en-deus dirag on daoulagad aroueziou braz-

meurbed, hag en-deus or miret en oll hent dre behini on-eus kerzet, hag e-touez an oll boblou dre greiz pere on-eus tremenet.

18. Hag harluet en-deus an oll vroadou-ze hag an Amorreed a chome en douar e pehini om deuet. Servija a raim eta an Aotrou, o veza ma eo eñ e-unan on Doue.

19. Ha Jozue a lavaras d'ar bobl : Ne hellot ket servija an Aotrou, rag eun Doue sant eo, eun Doue kreñv hag oazuz, ha n'eo ket heb anaoud ho torfejou hag ho pehejou.

20. Mar dilezit an Aotrou, ha mar servijit doueed a-ziavêz, e troio ennoh eneb hag e hlaharo ahanoh, hag e vevezo ahanoh goude beza greet vad deoh.

21. Hag ar bobl a lavaras da Jozue : Ne hoarvezo biken ar pez a leverez ; hogen servija a raim an Aotrou.

22. Ha Jozue a lavaras d'ar bobl : Testou oh penaoz hoh-eus dilennet hoh-unan an Aotrou evid e zervija. Hag i a respontas : Testou om.

23. Bremañ eta, emezañ, lamit an doueed a-ziavêz euz ho touez, ha soubilit ho kalonou etrezeg an Aotrou, Doue Izrael.

24. Hag ar bobl a lavaras da Jozue : Servija a raim an Aotrou on Doue, hag e sentim ouz e gelennou.

25. Jozue a reas eta en deiz-se kevredigez gand ar bobl, hag e lakaas dirazi ar helennou hag ar barnedigeziou, e Sicheim.

26. Skriva a reas ivez an oll heriou-ze e levr lezenn an Aotrou ; hag e kemeras eur mên braz-meurbed, a lakaas dindan eur wezenn dero a oa e santuar an Aotrou :

27. Hag e lavaras d'an oll bobl : Setu ar mên-ze a vezo da dest deoh, penaoz en-deus klevet an oll gomziou en-deus lavaret an Aotrou deoh ; gand aon na fellfe deoh goude-henn o dinaha, ha lavaroud gevier d'an Aotrou ho Toue.

28. Hag e kasas kuit ar bobl, pep hini d'e dra²⁴¹.

29. Ha goude-ze, Jozue, mab Nun, servijer an Aotrou, a varvas, hag eñ oajet a zeg vloaz ha kant.

30. Hag i a vezias anezañ e harzou e dra e-unan, e Tamnatsare, a zo diazezet war menez Efraim, war-zu an hanternoz euz a venez Gaas.

31. Hag Izrael a zervijas an Aotrou e-pad an oll zeiziou euz a Jozue hag euz an henaoured a vevas pell amzer goude Jozue, ha pere a anaveze an oll oberiou en-doa greet an Aotrou en Izrael.

32. Bezia a rejont ivez eskern Jozef, o-doa degaset bugale Izrael euz an Ejipt, e Sicheim, en eul leh euz ar park en-doa prenet Jakob digand bugale Hemor, tad Sicheim, hag a oa degouezet e kerz da vugale Jozef.

33. Eleazar, mab Aaron, a varvas ivez ; hag e vezjont anezañ a Gabaot, a oa da Fineez, e vab, hag a oa bet roet dezañ war menez Efraim.

²⁴¹ d'e dra : d'e herez.

Ar Varnerien.

III. Pennad.

An Izraelited a zo tre d'ar Gananeed.

1. Goude ma oe maro Jozue, bugale Izrael a houlennas kuzul digand an Aotrou, o lavaroud : Piou a bigno en or raog a-eneb ar Gananeed, ha piou a vezo da rener deom er brezel-ze ?
2. Hag an Aotrou a lavaras : Juda a bigno a-raog. Setu em-eus lakaet douar an enebourien etre e zaouarn ;
3. Ha Juda a lavaras da Simeon e vreur : Pign ganen el lodenn a zegouezo din, ha stourm ouz ar Gananeed evid ma kerzin ganez el lodenn a zegouezo dit ; ha Simeon a yeas kuit gantañ.
4. Ha Juda a bignas, hag an Aotrou a lakaas ar Gananeed hag ar Ferezeed etre o daouarn : hag i a drehas e Bezek deg mil den.
5. Hag i a gavas e Bezek Adonibezek ; hag e stourmjont outañ ; hag e trehjont ar Ganaeed hag ar Ferezereed.
6. Hogen Adonibezek a dehas ; hag i a yeas war e lerh, hag a bakas anezañ ; hag e trohjont barrou e zaouarn hag e dreid.
7. Hag Adonibezek a lavaras : Tri-ugent roue, goude beza bet trohet dezo barrou o daouarn hag o zreid, a zastume dindan va zaol ar boued a chome euz va dilerh : evel ma em-eus greet, en-deus greet an Aotrou din. E gas a rejont da Jeruzalem, hag e varvas eno.
8. Rag bugale Juda, o veza gronnet Jeruzalem, a gemeras anezi, a lazas an oll dud gand ar hleze, hag a lakaas an tan er gêr oll.
9. Ha goude-ze e tiskennjont hag e stourmjont ouz ar Gananeed a chome war ar meneziou, ha war-zu ar hreisteiz, hag er hompezennou.
10. Ha Jud o veza eet a-eneb ar Gananeed a chome e Hebron, anvet en amzer-ze Kariat-Arbe, a drehas Sesai, hag Abiman, ha Tolmai :
11. Hag o veza eet oll ahano, e kerzas a-eneb tud Dabir, anvet en amzer goz Kariat-Sefer, da lavaroud eo, kêr al lizerou.
12. Ha Kaleb a lavaras : rei a rin va merh Akxa da wreg d'an hini a gemero hag a ziskaro Kariat-Sefer.
13. Hag Otoniel, mab Senez, breur yaouanka Kaleb, o veza he hemeret, e roas dezañ e verh Akxa da wreg.
14. Pa edo-hi en hent, heh ozah a alias anezi da houlenni eur park digand he zad. Hag o veza ma huanade houmañ azezet war eun azen, e lavaras Kaleb dezi : Petra a hoarvez ganez ?
15. Hag hi a lavaras : Ro da vennoz din ; rag eun douar seh eh-eus roet din : ro ivez unan hag a vezo glebiet gand dour. Kaleb eta a roas dezi eun douar a oa dour ennañ war-laez hag oh traoñ.
16. Hogen bugale ar Hinead, kar Moizez, a bignas euz a gêr ar palmez gand bugale Juda, d'an distro euz e zegouez a zo war-zu ar hreisteiz euz a Arad, hag e chomjont ganto.
17. Hogen Juda a yeas gand Simeon e vreur, hag e trehjont ar Ganaeed pere a chome e Sefast ; hag e lazjont anezo. Hag ar gêr-ze a oa anvet Horma, da lavaroud eo, anaoue.

18. Juda a gemeras ivez Gaza gand he harzou, hag Askalon, hag Akkaron gand o harzou.

19. Hag an Aotrou a oe gand Juda, hag eñ a berhennas ar broiou menezieg : hogen ne hellas ket trehi tud an draonienn, o veza m' o-doa kalz a girri falheg.

20. Hag i a roas, evel m' en-doa lavaret Moizez, Hebron da Galeb, pehini a lazas enni tri mab Enak.

21. Hogen bugale Benjamin ne lazjont ket ar Jebuceed pere a chome e Jeruzalem gand bugale Benjamin hag a zo chomet bete-vremañ.

22. Ti²⁴² Jozef a bignas ivez da Vetel, hag an Aotrou a oe ganto :

23. Rag pa hronnent kêr, a oa anvet Luza kent,

24. E weljont eur gwaz a zeue er-mêz euz a gêr, hag e leverjont dezañ : Diskouez deom dre beleh e heller mond e kêr, hag e raim trugarez dit.

25. Ha pa en-doe e ziskouezet dezo, ar re-mañ a lazas gand ar hleze oll dud kêr : hogen lezel a rejont da vond ar gwaz-se hag e oll gerent.

26. Hemañ o veza bet kaset kuit a yeas da vro Hettim, hag a zavas eno eur gêr, a anvas Luza, hag a zo c'hoaz hirio anvet evel se.

27. Manase ivez ne zismantras ket Belsan ha Tanak, gand o bourhiou, hag ar re a chome e Dor, hag e Jeblaam, hag e Mageddo gand o bourhiou ; hag ar Gananeed a zeraouas da chom ganto.

28. Hogen goude ma oe deuet Izrael da greñvaad, e lakaas anezo da bae gwiriou dezañ, ha ne fellas ket dezañ o has da get.

29. Efraim ivez ne lazas ket ar Gananeed a chome e Gazer ; hogen chom a reas ganto.

30. Zabulon ne zispennas ket ar re a chome e Setron hag e Naalol ; hogen ar Gananeed a chomas en o zouez, hag e paejont gwiriou dezañ.

31. Aser ivez ne zispennas ket ar re a chome e Akko, hag e Sidon, hag e Ahalab, hag e Ac'hazib, hag e Helba, hag e Afek, hag e Rohob,

32. Hag e chomas e-touez ar Gananeed a chome a-raog er vro-ze, ha ne lazas ket anezo.

33. Neftali ivez ne zismantras ket ar re a chome e Betsamer, hag e Betanat : hag e chomas e-touez ar Gananeed a chome a-raog er vro-ze, hag ar V/Betsamited hag ar V/Betanited a baeas gwiriou dezañ.

34. An Amorreed a strizas bugale Dan er menez, heb rei dezo leh da ziskenni d'ar gompézenn :

35. Hag i a chomas war menez Harez, da lavaroud eo, menez ar pri, e Ajalon hag e Salebim. Ha galloud ti Jozef a greñvaas, hag an Amorreed a baeas gwiriou dezañ.

36. Hogen harzou bro an Amorreed a oe adaleg kreh ar grug, beteg Petra, hag al lehiou uhellouh.

IV. Pennad.

Eun êl a damall he dianaoudegez d'ar bobl. Izrael a gouez en idolatri.

1. Hogen eun Êl d'an Aotrou a bignas euz a Halgala d'al leh anvet ar ouelerien, hag a lavaras : Ho tennet em-eus euz an Ejipt, hag ho lakaet da vond en douar diwar-benn pehini em-boa touet d'ho tadou : ha roet em-eus va ger deoh penaoz ne dorjjen biken ar gevredigez em-eus greet ganeoh.

²⁴² Ti : Tud an ti.

2. Nemed ne rajeh kevredigez gand tud an douar-mañ, ha gand ma tiskarjeh hoh aoteriou : ha n'eo ket fellet deoh selaoui va mouez. Perag hoh-eus-hu greet kement-se ?
3. Rag se eo n'eo ket bet fellet din kas anezo da get dirazoh ; evid ma vezint deoh enebourien, ha ma vezo o doueed eun abeg deoh da vond da goll.
4. Ha pa lavare Êl an Aotrou ar homziou-ze da oll vugale Izrael, e savjont-i o mouez en eur ouela.
5. Hag al leh-se a oe anvet leh ar ouelerien, pe an daerou : hag i a lazaz eno ostivou d'an Aotrou.
6. Jozue eta a gasas kuit ar bobl, ha bugale Izrael a yeas pep hini d'ar vro a oa degouezet dezañ evid he ferhenna.
7. Hag i a zervijas an Aotrou keit ha ma vevas Jozue hag an henaoured a vevas pell amzer e houde, ha pere o-doa gwelet kement en-doa greet an Aotrou e-keñver Izrael.
8. Hogen Jozue, mab Nun, servijer an Aotrou, a varvas d'an oad a zeg vloaz ha kant ;
9. Hag i a vezias anezañ e harzou e zegouez, e Tamnatsare war menez Efraim, war-zu an hanternoz euz a venez Gaas.
10. Hag an oll rumm tud-se o veza bet unanet gand o zadou, e savas re all, pere ne anavezent ket an Aotrou, hag an traou kaer en-doa greet e-keñver Izrael.
11. Ha bugale Izrael a reas an droug dirag an Aotrou, hag a zervijas Baal.
12. Hag e tilezjont an Aotrou, Doue o zadou, pehini en-doa o zennet euz a zouar an Ejipt : hag eh heulljont doueed a-ziavêz, doueed ar poblou a chome en-dro dezo, hag eh azeuljont anezo. Hag an Aotrou a zavas droug ennañ en o eneb.
13. O veza ma tilezent anezañ, ha ma heullent Baal hag Astarot.
14. Hag an Aotrou o sevel droug ennañ a-eneb Izrael, a lakaas anezo etre daouarn o enebourien, pere o hemeras, hag o gwerzas d'an enebourien a chome tro-war-dro : ha ne helljont ket ober penn d'o enebourien.
15. Hogen e pe tu bennag ma felle dezo mond, dorn an Aotrou a oa warnezo, evel m'en-doa e lavaret hag e douet dezo : hag i a oa glaharet-braz.
16. Hag an Aotrou a lakaas barnerien da zevel evid o zenna euz a zouarn ar re a waske warnezo ; hogen ne fellas ket dezo o zelaoui.
17. En em zaotra a rejont gand doueed a-ziavêz, hag eh azeuljont anezo. Dilezel a rejont buan an hent dre behini o-doa kerzet o zadou : ha petra bennag ma klevjont gourhemennou an Aotrou, e rejont pep tra a-eneb dezo.
18. Pa lakae an Aotrou barnerien da zevel, e teue da habaskaad, dre e drugarez, keit ha ma vevent, hag e selaoue keinvanou ar re hlaharet, hag e tenne anezo euz a zaouarn ar re a waske anezo.
19. Hogen goude ma oa maro ar barner, e tistroent d'o fehejou, hag e reent gwasoh eged n'o-doa greet o zadou, oh heulia doueed a-ziavêz, o servija anezo, hag oh o azeuli. Ne zilezjont ket o zechou fall, nag an hent kaled-braz dre behini e oant boazet da gerzoud.
20. Hag an Aotrou o veza eet droug ennañ a-eneb Izrael, a lavaraz : O veza ma he-deus ar bobl-mañ torret ar gevredigez em-boaz greet gand he zadou, ha ma eo bet fae ganti selaoui va mouez ;
21. Ne zismantrin ket ar broadou en-deus lezet Jozue pa eo maro ;
22. Evid ma welin dre ze petra eo bugale Izrael, ha ma welin hag i a vir hent an Aotrou hag a gerz ennañ, evel ma o-deus kerzet o zadou.
23. An Aotrou a lezas eta an oll vroadou-ze, ha ne fellas ket dezañ o dismantra raktal, ha n'o lakaas ket etre daouarn Jozue.

V. Pennad.

Bugale Izrael a zo tennet a sklaverez gand Otoniel, Aod, ha Samgar.

1. Setu amañ ar broadou a lezas an Aotrou, evid deski drezo Izrael hag ar re oll pere n'o-doa ket anavezet brezelioù ar Gananeed :
2. Evid ma teskje o bugale o-goude en em ganna ouz o enebourien, hag en em voaza da stourmi.
3. Ar pemp priñs euz ar Filistined, hag an oll Gananeed, hag ar Sidonied, hag an Heveed, pere a chome war menez Liban adaleg menez Baal-Hermon beteg ma'z eer da Emat.
4. Hag an Aotrou o lezas, evid ma arnodje Izrael drezo, ha ma welje hag i a zelaouje gourhemennou an Aotrou, en-doa roet d'o zadou dre henou Moizez, pe na zelaouje ket.
5. Rag-se bugale Izrael a chomas e-kreiz ar Gananeed, hag an Heteed, hag an Amorreed, hag ar Ferezeed, hag an Heveed, hag ar Jebuzeed ;
6. Hag i a gemeras da wragez o merhed, hag a roas da wragez d'o mibien o merhed o-unan, hag i a zervijas o doueed.
7. Hag i a reas an droug dirag an Aotrou, hag a ankounac'haas o Doue, evid servija Baalim hag Astarot.
8. Hag an Aotrou o veza eet droug ennañ a-eneb Izrael, a lakaas anezo etre daouarn Chusan-Rasataim, roue Mezopotamia ; hag e chomjont eiz vloaz dindan e veli.
9. Hag i a harmas ouz an Aotrou, pehini a lakaas da zavel eur salver dezo, hag o dieubas, da lavaroud eo, Otoniel, mab Senez, breur yaouanka Kaleb.
10. Spered an Aotrou a oe ennañ, hag eñ a varnas Izrael. D'ar brezel ez eas, hag an Aotrou a lakaas etre e zaouarn Chusan-Rasataim, roue Siria, hag eñ e lakaas dindan e veli.
11. Hag an douar a chomas e peoh e-pad daou-ugent vloaz ; hag Otoniel, mab Senez, a varvas.
12. Hogen bugale Izrael a reas adarre an droug dirag an Aotrou pehini a greñvaas en o eneb Eglon, roue Moab, o veza m'o-doa greet an droug drezañ.
13. Unani a reas gantañ bugale Ammon hag Amalek ; hag ez eas, hag e trehas Izrael, hag e kemeras kêr ar palmez.
14. Ha bugale Izrael a chomas triweh vloaz dindan galloud Eglon, roue Moab.
15. Ha goude-ze e harmjont ouz an Aotrou, pehini a lakaas da zavel eur salver dezo anvet Aod, mab Gera, mab Jemini, pehini a oa dehouiad ha kleizad. Ha bugale Izrael a gasas drezañ traou kaer da Eglon, roue Moab.
16. Aod a reas evitañ eun tager²⁴³ diou zremm, pehini en-doa eun arzorn hir evel palv an dorn, hag e lakaas anezañ dindan e zae war e vorzed dehou.
17. Hag eñ a ginnigas ar roou da Eglon, roue Moab. Hogen Eglon a oa gwall-deo.
18. Ha goude m'en-doa Aod kinniget dezañ e roou, ez eas kuit gand e genvreudeur a oa deuet gantañ.
19. Hag o veza distroet euz a Halgala, e peleh edo an idolou, e lavaras d'ar roue : Eur ger em-eus da lavaroud dit e sioul, o ! roue. Hag ar roue a lavaras tevel, hag ar re oll a oa war e dro o veza eet er-mêz,

²⁴³ : tager : eur hleze.

20. Aod a yeas d'e gavoud endra ma edo e-unan azezet en e gambr-hañv, hag e lavaras dezañ : Eur ger em-eus da lavaroud dit a-berz Doue. Hag ar roue a zavas raktal diwar e dron.

21. Hag Aod a astennas e zorn kleiz, a gemeras e dager diwar e vorzed dehou, hag a zankas anezañ en e gov,

22. Gand kement a nerz ma'z eas an arzorn gand an houarn er gouli, ha ma en em gavas striz gand al lard braz a oa e-barz. Ne dennas ket an tager er-mêz ; hogen e lezel a reas er horv el leh ma en-doa skoet : ha raktal ar mon a darzas er-mêz dre al lehiou kuz euz ar hov.

23. Hogen Aod, o veza serret gand evez mad doriou ar gambr, hag o veza stardet ar botenn,

24. A yeas er-mêz dre an nor a-dreñv. Koulskoude servijerien ar roue o veza deuet di, a welas dor ar gambr serret, hag e leverjont : Marteze e skarz e gov en e gambr-hañv.

25. Ha goude beza gortozet pell, ken n'o-doe mez, hag o weloud penaoz ne zigore den, e kemerjont an alhwez ; hag o veza digoret, e kavjont o Aotrou gourvezet war an douar hag eñ maro.

26. Hogen Aod, e-pad ma oant saouzanet, a dehas kuit, hag o veza tremenet leh an idolou, a beleh e oa distroet, e teuas da Zeirat :

27. Ha raktal e sonas gand ar horn-boud war menez Efraim ; ha bugale Izrael a ziskennas gantañ, hag eñ en o raog.

28. Hag Aod a lavaras dezo : Deuit war va lerh ; rag an Aotrou en-deus lakaet ar Voabited, on enebourien, etre on daouarn. Bugale Izrael a ziskennas eta war e lerh, hag e kemerjont gweviou²⁴⁴ ar Jourdan a gas da Voab : ha ne lezjont da dremenoud hini euz ar Vohabited.

29. Hogen laza a rejont en amzer-ze ar Voabited war-dro deg mil anezo, tud kreñv ha kaloneg oll.

30. Ha Moab a oe izellaet en deiz-se dindan dorn Izrael : hag ar vro a chomas e peoh e-pad pevar-ugent vloaz.

31. Goude hemañ e oe Samgar, mab Anat, pehini a lazas c'hweh-kant Filistin gand eur souh²⁴⁵ : hag eñ ivez a zivennas Izrael.

VI. Pennad.

Debbora ha Barak a zo treh da arme Jabin, roue Kanaan.

1. Bugale Izrael a reas adarre an droug dirag an Aotrou goude maro Aod ;
2. Hag an Aotrou o lakaas etre daouarn Jabin, roue Kanaan, pehini a rene e Asor. Penn e arme a oa anvet Sisara, hag a chome e Haroset, kêr ar broadou.
3. Ha bugale Izrael a harmas ouz an Aotrou :rag Jabin en-doa nao-hant karr falheg, ha gwasket en-doa warnezo e-pad ugent vloaz.
4. Hogen Debbora ar brofedez, gwreg Lapidot, a varne ar bobl en amzer-ze.
5. Hag hi a azeze dindan eur wezenn balmez a oa bet galvet euz heh ano, etre Rama ha Betel war menez Efraim ; ha bugale Izrael a bigne d'he havoud en o oll strivou.
6. Hag hi a gasas da hervel Barak, mab Abinoem, euz a Zedez Neftali, hag a lavaras dezañ : An Aotrou, Doue Izrael, a re ar gourhemenn-mañ dit : kee, ha kas an

²⁴⁴ gweviou : roudouriou.

²⁴⁵ eur souh : eur broud.

arme war menez Tabor, ha kemer ganez deg mil brezeliad euz a vibien Neftali hag euz a vibien Zabulon :

7. Hogen me a gaso dit el leh ma ema froud Kison, Sisara, penn arme Jabin, hag e girri, hag e oll dud, hag e likiin anezo etre da zaouarn.

8. Ha Barak a lavaras dezi : Mar teuez ganen, ez in : ma ne fell ket dit dond ganen, n'ez in ket.

9. Hag hi a lavaras dezañ : Mond a rin ganez ; hogen evid ar wech-mañ, ar gounid ne vezo ket roet dit, o veza ma vezo lakaet Sisara etre daouarn eur vaouez. Debbera a zavas eta, hag a yeas gand Barak da Zedez.

10. Hemañ o veza lakaet da zond mibien Zebulon ha Neftali, a bignas gand deg mil brezeliad, ha Debbora gantañ.

11. Hogen Haber ar Sinead a oa en em dennet gwechall euz a douez e vreudeur all ar Sinead, mibien Hobab, kar da Voizez : hag eñ en-doa displeget e deltou beteg an draonienn anvet Sennim ; hag edo tost da Zedez.

12. Lavaret e oe da Zisara penaoz e oa pignet Barak, mab Abinoem, war menez Tabor :

13. Hag eñ a zastumas e nao-hant karr falhet hag a gasas e oll arme euz a Haroset, kêr ar broadou, da froud Sison.

14. Ha Debbora a lavaras da Varak : Sao, rag hemañ eo an deiz e pehini en-deus an Aotrou lakaet Sisara etre da zaouarn : setu-eñ e-unan a zo da rener dit. Barak a zsikennas eta diwar menez Tabor, ha deg mil brezeliad gantañ.

15. Hag an Aotrou a lakaas ar spont da zevel e Sisara hag en e oll garrenerien, hag en e oll dud, hag e kouezjont dindan ar hleze dirag Barak : en heveleb doare ma tilmmas Sisara euz e garr ha ma tehas war droad.

16. Ha Barak a yeas war-lerh ar hirri hag an arme beteg Haroset, kêr ar broadou ; hag an oll rumm enebourien a gouezas hag a oe lazet.

17. Hogen Sisara o tehoud en em gavas e-tal telt Jahel, gwreg Haber ar Sinead. Rag peoh a oa etre Jabin, roue Asor ha ti Haber ar Sinead.

18. Jahel eta o veza eet war arbenn da Sisara, a lavaras dezañ : Deus em zelt, va Aotrou, deus, ha n'az-peus ket a aon. Hemañ o veza eet en he zelt, ha goude ma he-doe-hi e holoet gand eur vantell,

19. A lavaras dezi : Ro din, me az ped, eur banne dour, rag eur sehed braz em-eus. Hag hi a zizoloas bouhkenn al lêz, hag a roas dezañ da eva ; ha goude e holoas.

20. Ha Sisara a lavaras dezi : Chom en da zav ouz dor an telt ; ha mar deu unan bennag da ober ar goulenn-mañ diganez : ha n'eus den amañ ? E liviri : N'eus den.

21. Hogen Jahel, gwreg Haber, a gemeras unan euz a dachou an telt hag eur morzol : hag o veza eet e-barz goustad ha sioul, e lakaas an tach war ividig Sisara, hag o veza e skoet gand ar morzol, e sankas anezañ en e empenn beteg an douar : hag eñ oh unani ar maro gand ar housk, a dremenas hag a varvas.

22. Ha setu Barak o vond war-lerh Sisara, a zeuas di : ha Jabel o veza eet war e arbenn a lavaras dezañ : Deus hag e tiskouezin dit an den a glaskez. Hag eñ o veza eet en he zelt, a welas Sisara gourvezet hag eñ maro, hag an tach sanket en e ividig.

23. Doue eta a izellaas en deiz-se Jabin, roue Kanaan, dirag bugale Izrael.

24. Ar re-mañ a greske bemdez hag a waskas gand eun dorn kreñv war Jabin, roue Kanaan, ken n'her hasjont da get.

VII. Pennad.

Kanaouenn Debbora ha Barak.

1. Debbora ha Barak, mab Abinoem, a ganas en deiz-se o lavaroud :
2. C’hwi pere, e-touez bugale Izrael, oh en em lakaet e-tal da goll ho puhez, bennigit an Aotrou.
3. Selaouit, roueed, digorit ho tiskouarn, priñsed : me eo, me eo a gano d’an Aotrou, a ray eur ganaouenn d’an Aotrou, Doue Izrael.
4. Aotrou, pa out deuet er-mêz euz a Zeir, ha pa out tremenet dre vro Edom, an douar en-deus krenet, an neñvou hag ar hoabr o-deus diveret dour.
5. Redet o-deus ar menezioù a-zirag an Aotrou, ha Sinai a-zirag an Aotrou, Doue Izrael.
6. E deizioù Samgar, mab Anat, e deizioù Jahel, e oa dizarempredet ar gwenodennou : hag ar re a gerze drezo a vaele dre heñchou distro.
7. An dud kreñv a ehanas e Izrael, hag a arzaoas, beteg ma savas Debbora, ma savas da vamm da Izrael.
8. Brezelioù nevez en-deus dilennet an Aotrou, hag eñ e-unan en-deus diskaret dorioù e enebourien : rag ne weled kent na tirenn²⁴⁶ na goaf e-touez daou-ugent mil den e Izrael.
9. Va halon a gar priñsed Izrael : c’hwi pere oh en em lakaet a galon vad da goll ho puhez, bennigit an Aotrou.
10. C’hwi pere a zo pignet war azened kaer, pe a zo azezet war kador ar varn, pe a vale en hent, komzit.
11. El leh ma eo bet torret ar hirri ha ma eo bet trehet arme an enebourien, eno e vezo lavaret peger feal ha peger mad eo an Aotrou e-keñver ar re galoneg euz a Izrael : Neuze pobl an Aotrou a zo diskennet e-tal ar perzier, hag en-deus bet ar galloud.
12. Sao, sao, Debbora, sao, sao, ha kan eur ganaouenn. Sao, Barak, ha krap en da sklaved, mab Abinoem.
13. Ar re a chome euz a-douez ar bobl a zo bet saveteet, an Aotrou en-deus stourmet er re greñv²⁴⁷.
14. Gand Efraim en-deus o dispennet e Amalek, hag en e houde Benjamin en da boblou, o ! Amalek. Diskennet eo ar briñsed euz a Vac’hir, hag euz a Zabulon, evid kas an arme d’ar brezel.
15. Pennou braz Isakar a zo savet gand Debbora, hag i a zo eet war roudou Barak, pehini a zo en em daolet er riskl, evel en eun toraod hag en eul lonk. Dizunvan e oa Ruben en e eneb e-unan, ar re galoneka anezo a oe kavet o striva.
16. Perag e chomez-te etre daou harz, evid klevoud blejadennou ar chatal ? Dizunvan e oa Ruben en e eneb e-unan, ar re galoneka anezo a oe kavet o striva.
17. Galaad a chome en ehan en tu all d’ar Jourdan, ha Dan a oa gand e listri-mor ; Aser a chome war aod ar mor hag a ziskuize en e borzioù.
18. Hogen Zabulon ha Neftali a zo en em lakaet e-tal da goll o buhez e bro Merome.
19. Deuet eo ar roueed, ha stourmet o-deus ; roueed Kanaan o-deus stourmet e Tanac’h, e-barz doureier Mageddo, ha koulskoude n’o-deus kemeret preiz ebed.
20. Stourmet eo bet outo euz an neñv : ar stered, o chom en o reiz hag en o zro, o-deus stourmet ouz Sisara.
21. Froud Sison he-deus kaset ganti o horvou maro, froud Kadumien, froud Sison : o ! va ene, flastr ar re greñv.
22. Karn ar hezeg a zo kouezet, gand an herr euz ar re a dehe hag euz ar re greñva e-touez an enebourien pere en em strinke en toraod.

²⁴⁶ tirenn : skoed.

²⁴⁷ er re greñv : a-eneb ar re greñv.

23. Milligit douar Meroz, eme êl an Aotrou : milligit ar re a chom ennañ, o veza n'int ket deuet da gennerza an Aotrou, da gennerza ar re galoneka euz e dud.

24. Benniget ra vezo etre an oll wragez Jahel, gwreg Haber ar Sinead, ha benniget ra vezo en he zelt.

25. D'an hini a houlenne dour e roas lêz : e lestr ar briñsed e roas dienn dezañ.

26. Gand he dorn kleiz e kemeras an tach, ha gand he dorn dehou morzol ar vicherourien ; hag o klask al leh euz ar penn e pehini e raje ar gouli, e sankas an tach e ividig Sisara.

27. Ouz he zreid e kouezas-eñ : tremenoud a reas hag e varvas : en em ruilla a reas ouz he zreid, hag e hourvezas heb buhez ha reuzeudig.

28. E vamm, o selloud dre ar prenest, a youhe hag a lavare euz he hambr : Perag e talvez e garr da zistrei ? Perag e talvez treid e bevar marh ?

29. Unan euz ar re furra euz e wragez a gomzas evel-henn ouz he mamm-gaer :

30. Marteze bremañ e rann ar preiz, hag e tilenner evitañ ar gaerra euz ar merhed : dillad marellet a roer da Zisara evid he lodenn, hag e tastumer ar broderezou ar re vrava evid lakaad ouz e houzoug.

31. Ra'z ay da get evel-se da oll enebourien, o ! Aotrou ; hogen ar re az kar, ra lugernint er hiz ma luh an heol pa zav.

32. Hag ar vro a chomas e peoh e-pad daou-ugent vloaz.

VIII. Pennad.

An Izraelited dindan beli ar Vadianited. Gedeon a denn anezo euz a sklaverez.

1. Hogen bugale Izrael a reas droug dirag an Aotrou, pehini o lakaas etre daouarn ar Vadianited e-pad seiz vloaz :

2. Hag i a oe gwasket-braz ganto. Hag e toulljont keviou ha mougeviou er menezioù, hag e savjont lehiou kreñv evid en em zivenni.

3. Ha goude m'o-doa hadet an Izraelited, ar Vadianited, hag an Amalekited, hag ar poblou all euz ar sav-heol, a bigne di,

4. Hag o tisplega o zeltou en o bro, e wastent kement a oa c'hoaz e geot beteg perzier Gaza, ha ne lezent d'an Izraelited netra euz a gement a zo red evid beva, na deñved, nag ejenned, nag ezen.

5. Rag i a zeue gand o oll chatal, ha gand o zeltou ; hag evel ar hilleien-raden e leugnent peb leh, hag o veza ma oa anezo eul lod braz a dud hag a gañvaled, e wastent pep tra dre ma stokenet outo.

6. Izrael a oe eta izellaet-braz dirag ar Vadianited.

7. Hag eñ a harmas ouz an Aotrou, o houlenni skoazell a-eneb ar Vadianited.

8. Hag an Aotrou a gasas dezo eun den hag a oa profed, hag a lavaras dezo : Setu petra a lavar an Aotrou, Doue Izrael : Me em-eus ho lakaet da ziskenni euz an Ejipt, hag em-eus ho tennet euz a vro ar sklaverez ;

9. Hag ho tennet em-eus euz a zaouarn an Ejiptianed hag euz an oll enebourien a hlahare ahanoh : hag o haset em-eus kuit pa oh deuet, hag em-eus roet deoh o daouarn.

10. Hag em-eus lavaret deoh : Me eo an Aotrou ho Toue ; n'ho-pezet ket a aon rag doueed an Amorreed, e bro pere e chomit. Ha n'eo ket fellet deoh selaoui va mouez.

11. Hogen êl an Aotrou a zeuas hag a azezas dindan eun dervenn a oa e Efra, hag a oa da Joas, tad tiad Ezri. Hag e-pad ma oa Gedeon e vab o torna hag o wenta an ed e ti ar waskell, evid tehoud diou ar Vadianited,

12. Êl an Aotrou en em ziskouezas dezañ hag a lavaras : Ema an Aotrou ganez, o ! ar hreñva euz an dud.

13. Ha Gedeon a lavaras dezañ : Lavar din, va Aotrou, me az ped, mar dema an Aotrou ganeom, perag e c'hoarvez kement-se ganeom ? Peleh ema e vuzudou, o-deus danevellet deom on tadou, o lavaroud : an Aotrou en-deus on tennet euz an Ejipt ? Hogen bremañ an Aotrou en-deus on dilezet hag ol lakaet etre daouarn ar Vadianited.

14. Hag an Aotrou a zellas outañ hag a lavaras : Kee gand an nerz-se dit, hag e tenni Izrael euz a zaouarn ar Vadianited. Gouez penaoz eo me em-eus kaset ahanout.

15. Hag eñ a lavaras : Lavar din, va Aotrou, me az ped, penaoz e tieubin Izrael ? Setu va ziad a zo euz ar re zisterra e Manase, ha me a zo an diweza e ti va zad.

16. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Me a vezo ganez : ha te a dreho ar Vadianited evel eun den hepken.

17. Ha Gedeon a lavaras dezañ : Me em-eus kavet trugarez dirazoud, ro din eun arouez penaoz eo te a gomz ouzin.

18. Diwall mond kuit ahann ken na vezin distro etrezeg ennout, ken na zougin eur sakrifis ha ma e gemennin dit. Hag eñ a lavaras : Me a hortozo ken ne vezi distro.

19. Gedeon eta a yeas en e di hag a reas baraou dihoell gand eur goñvor bleud : hag o veza lakaet ar hig en eur havell, hag ar sun en eur pod, o hasas oll dindan an dervenn, hag o hinnigas d'an êl.

20. Hag êl an Aotrou a lavaras dezañ : Kemer ar hig hag ar baraou dihoell, ha laka i war ar mên-ze, ha skuill ar sun warnezo. Ha pa en-doe greet evel-se,

21. Êl an Aotrou a astennas penn ar wialenn a oa en e zorn, hag e stokas ouz ar hig hag ouz ar baraou dihoel : hag e savas tan euz ar mên a zevas ar hig hag ar baraou dihoell : hogen êl an Aotrou a dehas a-zirag e zaoulagad.

22. Ha Gedeon o weloud penaoz e oa êl an Aotrou, a lavaras : Allaz, Aotrou va Doue, gwelet em-eus êl an Aotrou dremm-oh-dremm.

23. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Ar peoh ra vezo ganez : n'az-pezh ket a aon, ne varvi ket.

24. Gedeon a zavas eta eno eun aoter d'an Aotrou, hag a halvas anezi peoh an Aotrou, hag a weler c'hoaz hirio. Ha pa edo c'hoaz e Efra, a zo e kerz tiad Ezri.

25. En noz-se an Aotrou a lavaras dezañ : Kemer taro da dad hag eun taro all en-devezo seiz vloaz, ha diskar an aoter Baal a zo d'az tad, ha troh 'rez an douar ar hoad a zo en-dro d'an aoter ;

26. Hag e savi eun aoter d'an Aotrou da Zoue war benn ar mên-ze, war pehini eh-eus kent kinniget eur sakrifis : hag e kemeri an eil taro hag e kinnigi anezañ evel eur sakrifis-losk war eur bern keuneud euz an hini az-pezo trohet er hoad.

27. Gedeon eta o veza kemeret deg den euz e vevellou, a reas evel m'en-doa gourhemennet an Aotrou dezañ. Hogen gand aon rag ti e dad, ha rag tud ar gêr-ze, ne fellas ket dezañ e ober a-hed an deiz, hogen a-hed an noz e reas pep tra.

28. Ha pa zavas diou ar mintin tud ar gêr-ze, e weljont aoter Baal diskaret, hag ar hoad trohet, hag an eil taro lakaet war an aoter nevez-savet.

29. Hag e leverjont an eil d'egile : Piou en-deus greet an dra-ze ? Ha pa enklaskent piou en-doa e hreet, e oe lavaret : Gedeon, mab Joas, en-deus greet kement-se.

30. Hag i a lavaras da Joas : Degas da vab amañ, ma vezo lakaet d'ar maro, dre ma en-deus diskaret aoter Baal ha ma en-deus trohet ar hoad.

31. Ha Joas a lavaras dezo : Ha c'hwi eo veñjerien Baal, evid ma stourmot evitañ ? Neb a zo da enebour dezañ ra varvo a-barz ma vezo tarzetañ an deiz a warhoaz : mar deo Baal eun doue, n'en em veñjo euz an hini en-deus diskaret e aoter.

32. Abaoe an deiz-se, Gedeon a oe anvet Jerobaal, o veza m'en-doa lavaret Joas : R'en em veñjo Baal euz an hini en-deus diskaret e aoter.

33. Koulskoude an oll Vadianited, hag an Amelekited, ha poblou ar sav-heol en em zastumas oll ; ha goude beza treuzet ar Jourdan, e stegnont o hamp e traonienn Jezrael.

34. Hogen spered an Aotrou a zeuas war Gedeon, pehini o seni gand ar horn-boud a zastumas ti Abiezer, evid ma teuje war e lerh.

35. Hag eñ a gasas kannaded dre oll vreuriez Manase, pehini a zeuas ivez war e lerh : kannaded all a gasas ivez da vreuriezou Aser ha Zabulon, ha Neftali, pere a yeas war e arbenn.

36. Ha Gedeon a lavaras da Zoue : Mar dieubez Izrael gand va dorn, evel ma eh-eus lavaret,

37. Lakaad a rin ar hreoñ gloan-mañ war al leur : mar kouez ar gliz war ar hreoñ hepken, ha mar chom seh an douar oll, e ouezin penaoz e tieubi Izrael gand va dorn, evel ma eh-eus e lavaret.

38. Hag evel-se e c'hoarvezas. Hag eñ, o sevel mintin mad, a waskas ar hreoñ hag a gargas leun eur hop gand ar gliz.

39. Ha Gedeon a lavaras c'hoaz da Zoue : Na zav ket da vuaneged em eneb ma teuan eur wech c'hoaz da arnodi ahanout, o klaskoud eun arouez er hreoñ. Bezet, me az ped, ar hreoñ hepken seh, hag an douar oll gleb gand ar gliz.

40. Ha Doue a reas en noz-se ar pezh en-doa goulennet ; ar hreoñ hepken a oe seh hag ar gliz a gouezas war an douar oll.

IX. Pennad.

Gedeon gand tri-hant den a zo treh d'ar Vadianited.

1. Jerobaal eta, pehini a zo ivez Gedeon, o veza savet mintin mad, hag an oll bobl gantañ, a zeuas d'ar feunteun a zo anvet Harad : hogen kamp ar Vadianited a oa en draonienn, war-zu an hanternoz euz a eur grehenn uhel-braz.

2. Hag an Aotrou a lavaras da Hedeon : Eur bobl vraz a zo ganez, ha ne vezo ket lakaet ar Vadianited etre he douarn ; gand aon na zeuje Izrael d'en em veuli en eneb ha da lavaroud : Gand va nerz va-unan on bet dieubet.

3. Komz ouz ar bobl hag embann kement-mañ, ma vezo klevet gand an oll : Neb a zo aonig ha digalon, eet war e giz. Ha daou vil den warn-ugent euz ar bobl a yeas war o hiz euz a Halaad, ha deg mil hepken a chomas.

4. Hag an Aotrou a lavaras da Hedeon : Re vraz eo c'hoaz ar bobl, kas hi war an doureier, hag eno eh arnodin anezo : hag an hini a livirin dit az ay ganez, az ay ; hag an hini a zivennin outañ n'ez ay, a zistroy war e hiz.

5. Ha pa oe diskennet ar bobl war ribl an doureier, an Aotrou a lavaras da Hedeon : Ar re a lapo an dour gand o zeod e-giz ma oa boazet ar chas da ober, a likii en eun tu ; hag ar re a blego o daoulin evid eva, a likii en eun tu all.

6. An niver euz ar re a lapas dour o kas o dorn d'o genou, a oe euz a dri-hant den : hogen ar re all euz ar bobl o-doa evet o plega o daoulin.

7. Hag an Aotrou a lavaras da Hedeon : Gand an tri-hant den o-deus lapet an dour, e tennin ahanoh euz a sklaverez, hag e likin ar Vadianited etre da zaouarn : hogen distroet ar re all euz ar bobl pep hini d'e gêr.

8. Goude beza kemeret boued ha kerniel-boud diou an dud o-doa, e hourhemennas Gedeon d'ar re all euz ar bobl distrei pep hini d'e delt : hag eñ gand an tri-hant den a gerzas evid an emagnn. Hogen kamp ar Vadianited a oa a-iz en draonienn.

9. En noz-se e lavaras an Aotrou dezañ : Sao ha diskenn d'ar hamp ; rag o lakaet em-eus etre da zaouarn.

10. Ha ma eh-eus aon o vond da-unan, diskennet ganez Fara, da vevel.

11. Ha pa'z-pezo klevet ar pez a leveront, neuze e kreñvay da zaouarn hag e tiskenni gand mui a fiziañs a-eneb kamp an enebourien. Diskenni a reas eta gand Fara e vevel beteg al leh euz ar hamp, e pehini edo gederien an arme.

12. Hogen ar Vadianited hag an Amalekited, hag an oll boblou euz ar sav-heol, a oa gourvezet a bep tu en draonienn, evel eul lod braz diniver a gilleien-raden : bez' e oa ivez eul lod diniver a gañvaled, evel an trêz a zo war aod ar mor.

13. Ha pa oa deuet Gedeon, unan euz ar vrezilidi a zisplege e huñvre da eun all a oa tost dezañ : ha setu penaoz e lavare ar pez en-doa gwelet : Eun huñvre em-eus bet, ha me a grede din e welen eun dorz vara heiz poazet dindan al ludu a ruille, hag a ziskenne e kamp ar Vadianited : hag o veza deuet ouz eun telt, e stokas outañ, e ziskaras, hag e daolas d'an douar.

14. An hini ouz pehini e komze a lavaras dezañ : Kement-se n'eo netra ken nemed kleze Gedeon, mab Joas, den a Izrael : rag an Aotrou en-deus lakaet etre e zaouarn ar Vadianited hag o oll gamp.

15. Ha pa en-doe klevet Gedeon an huñvre, hag an disklêriadur anezi, eh azeulas Doue : hag e tistroas da gamp Izrael hag e lavaras : Savit, rag an Aotrou en-deus lakaet kamp Madian etre on daouarn.

16. Hag eñ a rannas an tri-hant den e teir lodenn, hag e roas dezo kerniel-boud en o daouarn, ha podou goullo, ha kleuzeuriou e-kreiz ar podou.

17. Hag eñ a lavaras dezo : Ar pez am gwelot oh ober, grit eñ ivez : mond a rin dre eun tu euz ar hamp, ha grit evel a rin.

18. Pa likiin da zeni ar horn-boud a zo em dorn, c'hwi ivez likit da zeni ho re tro-war-dro d'ar hamp, ha garmit war eun dro : D'an Aotrou da da Hedeon.

19. Gedeon eta a yeas en eun tu euz ar hamp, hag an tri-hant den a oa gantañ, pa edod o lakaad ar hederien war-dro hanternoz. Ha pa oe dihunet ar hederien, en em lakaas ar re-mañ da zeni gand o herniel-boud ha da steki o fodou an eil ouz egile.

20. Ha goude m'o-doe sonet e tri leh en-dro d'ar hamp, ha m'o-doe torret o fodou, e talhjont ar hleuzeuriou gand an dorn kleiz, ha gand an dorn dehout ar herniel-boud gand pere e sonent : hag e harmjont : Kleze an Aotrou ha Gedeon.

21. Pep hini a choms en e leh war-dro kamp an enebourien. Evel-se an oll gamp a oe saouzanet, hag en em lakejont da harmi ha da dehoud en eur yuda.

22. Hag an tri-hant den ne ehanent ket da zeni gand o herniel-boud. Hag an Aotrou a lakaas kleze an eil da zevel ouz kleze egile dre an oll gamp, hag i en em laze etrezo ;

23. Hag a dehas beteg Betsetta, ha beteg lezenn Abelmehula e Tebbat. Hogen tud Izrael euz a vreuriez Neftali, euz a Aser, hag euz a oll Vanase a harme kevred hag a yeas war-lerh ar Vadianited.

24. Ha Gedeon a gasas kannaded war oll venez Efraim, evid lavaroud : Diskennit da ziarbenna ar Vadianited, ha kemerit dre nerz an doureier beteg Betbera hag ar Jourdan. Hag oll Efraim a harmas, hag a gemeras dre nerz an doureier hag ar Jourdan beteg Betbera.

25. Hag i o veza kemeret daou euz a briñsed ar Vadianited, Oreb ha Zeb, e lazjont Oreb war mên Oreb, ha Zeb e gwaskell Zeb. Hag i a yeas war-lerh ar Vadianited, hag a gasas pennou Oreb ha Zeb da Hedeon en tu all d'ar Jourdan.

X. Pennad.

Gedeon a habaska mibien Efraim. Maro Gedeon.

1. Ha mibien Efraim a lavaras dezañ : Perag eo bet fellet dit ober evel-se, ha n'eh-eus-te ker or galvet, pa out eet da stourmi ouz ar Vadianited ? Hag i a grozas anezañ stard, ha beteg en em ziboella outañ koulz lavared.
2. Ha Gedeon a lavaras dezo : Petra a hellen-me da ober heñvel ouz ar pezh hoh-eus greet ? Ha n'eo ket gwelloc'h eur bod-rezin euz a Efraim, eged eost-rezin Abiezer ?
3. An Aotrou en-deus lakaet etre ho taouarn priñsed ar Vadianited, Oreb ha Zeb : petra em-eus-me greet heñvel ouz ar pezh hoh-eus greet ? Pa en-doe komzet evel-se, o spered a habaskaas, pa oent heget en e eneb.
4. Ha pa oa deuet Gedeon da ribl ar Jourdan, e treuzas anezañ gand an tri-hant den a oa gantañ, ha pere a oa ker skuiz na hellent mui mond war-lerh an deherien.
5. Ha Gedeon a lavaras da dud Sokkot : Roit bara, me ho ped, d'ar bobl a zo ganen, rag skuiz-braz int ; evid ma hellim mond war-lerh Zebee ha Salmana, roueed Madian.
6. Hag ar pennoù braz euz a Sokkot a lavaras : Marteze ema Zebee ha Salmana etre da zaouarn, ha dre ze e houlennez e rojem bara d'az arme.
7. Hag eñ a lavaras dezo : Pa en-devezo eta an Aotrou lakaet Zebee ha Salmana etre va daouarn, e vrevin ho korv gand drein ha gand dreiz²⁴⁸ euz an distro.
8. Hag o pigna ahano, e teuas da Eanuel : hag e reas an heveleb goulenn ouz tud al leh-se. Hag i a respontas evel m'o-doa respontet tud Sokkot.
9. Hag eñ a lavaras ivez dezo : Pa vezin distro e peoh ha treh, e tiskarin an tour-ze.
10. Hogen Zebee ha Salmana a ehane gand o oll arme. Pempzeg mil den a oa chomet ken euz an oll vandennou poblou euz ar sav-heol, goude ma oe bet lazet c'hweh-ugent mil brezeliad a denne ar hleze.
11. Ha Gedeon o pigna dre hent ar re a chome dindan teltou, war-zu ar sav-heol euz a Nobe hag euz a Jegbaa, en em daolas war gamp an enebourien, pere n'o-doa tamm disfiziañs ha n'edont war-var a zroug.
12. Zebee ha Salmana a dehas, ha Gedeon o veza eet war o lerh, o hemeras goude beza fêzet o oll arme.
13. Hag o tistrei euz ar brezel a-barz ma oe savet an heol,
14. E kemeras eun den yaouank euz a dud Sokkot, hag e houlennez digantañ anoiou ar briñsed hag an henaoured euz a Zokkot ; hag e skrivas seiteg ha tri-ugent.
15. Hag eñ a redas etrezeg tud Sokkot, hag a lavaras dezo : Setu Zebee ha Salmana diwar-benn pere hoh-eus va heskinet, o lavaroud : Marteze ema Zebee ha Salmana etre da zaouarn. Ha dre ze e houlennez e rojem bara d'ar re a zo skuiz ha displeber.
16. Kemeroud a reas eta henaoured kêr, ha drein ha dreiz an distro, hag e vrevas ganto tud Sokkot.
17. Tour Fanuel a ziskaras ivez, goude beza lazet tud kêr.
18. Hag eñ a lavaras da Zebee ha da Zalmana : Penaoz e oa an dud hoh-eus lazet e Tabor ? Hag i a lavaras : Heñvel ouzit, hag unan anezo evel mab eur roue.
19. Hag eñ a lavaras dezo : Va breudeur oant, mibien va mamm : beo eo an Aotrou, ma ho-pije o miret beo, ne lazjen ket ahanoh.
20. Hag eñ a lavaras da Jeter e vab hena : Sao, ha laz anezo. Hogen hemañ ne dennas ket e gleze, rag aon en-doa, o veza ne oa c'hoaz nemed eur bugel.
21. Neuze Zebee ha Salmana a lavaras : Sao, te, hag en em daol warnom : rag diouh an oad ema nerz eun den. Gedeon a zavas, hag a lazas Zebee ha Salmana ; hag eñ a

²⁴⁸ dreiz : askol (?).

gemas ar hinklerezou hag ar bloukou a lakeer peurvuia ouz gouzoug kañvaled ar roueed.

22. Hag oll wazed Izrael a lavaras da Hedeon : Bez aotrou warnom, te, ha da vab, ha mab da vab ; o veza ma eh-eus on tennet euz a zaouarn ar Vadianited.

23. Hag eñ a lavaras dezo : Ne vezin ket aotrou warnoh, ha va mab ne vezo ket ivez aotrou warnoh, an Aotrou eo a vezo aotrou warnoh.

24. Gedeon a lavaras c'hoaz dezo : Eun dra a houlennan diganeoh ; roit din al lagadennou skouarn a zo en ho preiz : rag an Izmaelited a zouge peurvuia lagadennou-skouarn aour.

25. Hag ar re-mañ a lavaras : A galon vad o roim. Hag o veza astennet eur vantell war an douar, e taoljont warnezi al lagadennou-skouarn o-doa bet euz ar preiz.

26. Hag ar pouez euz al lagadennou-skouarn en-doa goulennet Gedeon, a oa euz a vil seiz-kant sikl aour, heb niveri ar hinklerezou, hag ar helhennou, hag ar saeou limestra, a oa boazet roueed Madian da zougen, hag heb niveri gwakoliou aour ar hañvaled.

27. Ha Gedeon a reas gand kement-se eun efod²⁴⁹ hag hel lakaas en e gêr e-unan Efra. Hag oll Izrael a reas fallagriez diwar e benn, hag an efod-se a oe kirieg da Hedeon ha d'e oll di da vond da goll.

28. Hogen ar Vadianited a oa izellaet dirag bugale Izrael, ha ne helljont mui sevel o fennou : hogen an douar a chomas e peoh e-pad daou-ugent vloaz, ma oe Gedeon e penn dezañ.

29. Ha Jerobaal, mab Joas, a yeas hag a chomas en e di e-unan :

30. Hag eñ en-doe deg mab ha tri-ugent, deuet euz e gorv e-unan, o veza m'en-doa kalz a wragez.

31. Hogen e zerh, en-doa e Sichem, a hanas dezañ eur mab anvet Abimelek.

32. Ha Gedeon, mab Joas, a varvas en eur gozni vad, hag e oe beziet e bez Joas, e dad, e Efra euz a diad Ezri.

33. Hogen goude ma oe maro Gedeon, bugale Izrael en em zistroas hag en em zaotras oh heulia Baal. Hag i a reas kevredigez gand Baal, evid ma vije da Zoue dezo :

34. Ha n'o-doe mui a zoñj euz an Aotrou o Doue, pehini en-doa o zennet euz a zaouarn o oll enebourien tro-war-dro.

35. N'o-doe anaoudegez-vad ebed evid ti Jerobaal Gedeon, hervez an oll vadou en-doa greet en Izrael.

IX. Pennad.

Abimelek a laz e vreudeur. Lazet eo e-unan gand eur vaouez.

36. Hogen Abimelek, mab Jerobaal, a yeas da Zichenn etrezeg breudeur e vamm, hag a gomzas outo, hag ouz an oll gerentiez euz a di tad e vamm, o lavaroud :

37. Livirit an dra-mañ da oll dud Sichem : Pehini eo ar gwella ganeoh, pe beza gouarnet gand deg den ha tri-ugent, mibien oll da Jerobaal, pe beza gouarnet gand eun den hepken ? Evesait ivez ez on hoh askorn hag ho kig.

38. Ha breudeur e vamm a lavaras an oll draou-ze diwar e benn da oll dud Sichem ; hag e lakejont da blega o halon etrezeg Abimelek, o lavaroud : Or breur eo.

39. Hag i a roas dezañ deg lur ha tri-ugent e arhant euz a dempl Baalberit. Hag Abimelek a gasas gantañ ahano tud dineuz ha didalvez, pere a yeas war e lerh.

²⁴⁹ efod : eur skerb a veze lakaet gand beleien Izrael.

40. Hag eñ a zeuas da di e dad e Efra, hag a lazias war eun heveleb mên an deg mab ha tri-ugent Jerobaal²⁵⁰, e vreudeur : ne chomas nemed Joatan, mab yaouanka Jerobaal, pehini a yeas da guza.

41. Hogen oll dud Sicheim, hag oll diadou kêr Mello en em zastumas : hag ez ejont, hag e lekejont da roue Abimelek, e-tal an dervenn a oa e Sicheim.

42. Pa oe roet da anaoud kement-se da Joatan, ez eas hag en em lakaas en e zav war lein menez Garizim ; hag o sevel e vouez, e harmas hag a lavaras : Selaouit ahanon, tud Sicheim, evel ma selaouo Doue ahanoh.

43. Ar gwez en em zastumas evid lakaad eur roue warnezo, hag a lavaras d'ar wezenn olived : Bez roue deom.

44. Hag hi a lavaras : Ha ma hell dilezel va lard²⁵¹ a zo mad d'an doueed ha d'an dud, evid dond d'en em lakaad e penn ar gwez ?

45. Hag ar gwez a lavaras d'ar wezenn fiez : Deus, ha bez roue deom.

46. Hag hi a lavaras dezo : Ha me a hell dilezel va hwekder ha va frouez mad-meurbed, evid dond d'en em lakaad e penn ar gwez all ?

47. Hag ar gwez a lavaras d'ar winienn : Deus, ha bez roue deom.

48. Hag hi a lavaras dezo : Ha me a hell dilezel va gwin, pehini a laouena Doue hag an dud, evid en em lakaad e penn ar gwez all ?

49. Hag an oll weza a lavaras d'ar vodenn : Deus, ha bez roue deom.

50. Hag hi a lavaras dezo : Ma likit ahanon evid gwir da roue deoh, deuit ha diskuizit dindan va skeud : hogen ma ne fell ket deoh, ra zavo tan euz ar vodenn, ha ra zevo gwez sedr al Liban.

51. Hogen bremañ gwelit mar deo dre reiz hag hep pehed hoh-eus lakaet Abimelek da roue warnoh ; ma hoh-eus greet ervad e-keñver Jerobaal hag e di ; ha mar doh bet anaoudeg euz a vad-oberiou an hini en-deus stourmet evidoh,

52. Hag en-deus lakaet e vuhez e gwall, evid ho tenna euz a zaouarn ar Vadianited ;

53. C'hwi pere a zo bet savet a-eneb ti va zad, hoh-eus lazet war eun heveleb mên e zeg mab ha tri-ugent, hag hoh-eus lakaet da roue war tud Sicheim Abimelek, mab e vatez, o veza ma eo breur deoh.

54. Ma hoh-eus eta greet e-keñver Jerobaal hag e dud hervez ar reiz heg hep pehed, ha ma en em laouenait hirio e Abimelek, ra en em laouenaio eñ ivez ennoh.

55. Hogen ma hoh-esu greet en e geñver a-eneb peb reiz, ra zavo tan euz a Abimelek, ha ra zevo tud Sicheim ha kêr Mello : ra zevo tan euz a dud Sicheim hag euz a gêr Mello, ha ra zevo Abimelek.

56. Goude m'en-doe lavaret kement-se, e tehas Joatan, hag ez eas da Vera ; hag e chomas eno gand aon rag e vreur Abimelek.

57. Abimelek a renas eta war Izrael e-pad tri bloaz.

58. Hogen an Aotrou a gasas eur spered a zroug etre Abimelek ha tud Sicheim : hag ar re-mañ a zeuas d'e argarzi,

59. Ha da deurel war Abimelek, o breur, ha war ar briñsed all euz a Zicheim, an torfed da veza lazet an deg mab ha tri-ugent euz a Jerobaal, ha da veza skuillet o gwad.

60. Hag i a lakaas spiou dezañ war lein ar menezioù : hag o heda ma teuje, en em roent d'al laeroñsi, hag e preizent an dremenidi. Hogen roet e oe kement-se da anaoud da Abimelek.

61. Koulskoude Gaal, mab Obed, a zeuas gand e vreudeur, hag a dremenas e Sicheim. Tud Sicheim, oh e weloud en o zouez,

²⁵⁰ an deg mab ha tri-ugent Jerobaal : brezoneg fall : tenna kuit *an*.

²⁵¹ va lard : va eoul.

62. A yeas dre ar parkeier, o wastas ar gwiniennou, hag o vaha ar rezin ; hag o veza greet bagadou kanerien, ez ejont e-barz templ o doue ; hag etre ar banveziou hag ar gwerennadou²⁵², e villigent Amimelek.

63. Ha Gaal, mab Obed, a harme, o lavaroud : Piou eo Abimelek, ha petra eo Sichem, evid ma vezim dindannañ ? Ha n'eo ket ken mab Jerobaal, ha n'en-deus ket eñ lakaet Zebul e zervijer da briñs war tud Hemor, tad Sichem ? Perag eta e servijim-ni anezañ ?

64. A-youl ma lakaje eur re bennag ar bobl-se dindan va dorn, evid ma tennjen Abimelek euz o hreiz. Ha lavaret e oe da Abimelek : Stroll eun arme vraz, ha deus.

65. Ha Zebul, priñs kêr, o veza klevet ar pez a lavare Gaal, mab Obed, a zavas droug braz ennañ ;

66. Hag e kasas e kuz kannaded etrezeg Abimelek, evid lavaroud dezañ : Setu Gaal, mab Obed, a zo deuet da Zichem gand e vreudeur, hag e fell dezañ lakaad kêr da zewel en da eneb.

67. Sao eta e-pad an noz gand ar re euz da bobl a zo ganez, ha chom kuzet er parkeier ;

68. Ha da darz an deiz pa zavo an heol, en em daol war kêr ; ha pa'z ay-eñ er-mêz gand e bobl en da eneb, e ri dezañ ar pez a helli.

69. Abimelek a zavas eta gand e oll arme e-pad an noz ; hag a aozas spiou 'lez Sichem e pevar leh.

70. Ha Gaal, mab Obed, a yeas er-mêz, hag a chomas e-tal porz kêr ; hogen Abimelek hag e oll arme a zavas euz a leh ar spiou.

71. Ha pa welas Gaal ar bobl-se, e lavaras da Zebul : Setu eul lod braz a dud a ziskenn euz ar menezioù. Ha Zebul a lavaras dezañ : Skeudou ar menezioù eo a welez evel pennou tud, hag an dra-ze eo a douell ahannout.

72. Ha Gaal a lavaras c'hoaz : Setu eur bobl a ziskenn euz a-greiz an douar, hag eur vandenn a zeu dre an hent a zell ouz ar wezenn-dero.

73. Ha Zebul a lavaras dezañ : Peleh ema bremañ an herrder gand pehini e lavarez : Piou eo Abimelek evid ma vezim dindannañ ? Ha n'eo ket ar bobl-se a zisprizez ? Kee er-mêz ha stourm outi.

74. Gaal a yeas eta er-mêz dirag pobl Sichem, hag a stourmas ouz Abimelek,

75. Pehini hel lakaas da dehoud, a yeas war e lerh, hag hel lakaas d'en em denna e kêr : ha kalz euz a dud Gaal a oe lazet beteg ouz porz kêr.

76. Hag Abimelek a ehanas e Ruma : hogen Zebul a gasas er-mêz euz a gêr Gaal hag e dud, ha n'o lezas mui da chom enni.

77. Hogen aotrounez ar bobl a yeas war ar mêz. Ha pa oe lavaret kement-se da Abimelek,

78. Hemañ a gemeras e arme, a rannas e teir bandenn, goude beza aozet spiou er parkeier. Ha pa welas penaoz e teue ar bobl er-mêz euz a gêr, e savas hag en em daolas warnezo.

79. Stourmi reas outo gand e arme, hag e hronnas kêr : e-keit-se diou vandenn all a yeas war-lerh an enebourien, pere a dehe tu-mañ tu-hont dre ar parkeier.

80. Hogen Abimelek a stourmas ouz kêr e-pad an deiz-se oll : he hemeroud a reas hag e lazas he oll dud, ha goude beza he bevezet, eh hadas holen warnezi.

81. Pa glevas kement-se ar re a chome e tour Sichem, ez ejont e templ o doue Berit, e peleh o-doa greet kevredigez gantañ ; ha dioh-se e oa bet roet e ano d'al leh-se, pehini a oa kreñv-meurbed.

82. Hag Abimelek o veza klevet penaoz tud tour Sichem a oa en em zastumet oll,

²⁵² ar gwerennadou : oh eva kement-ha-kement.

83. A bignas war menez Selmon gand e oll bobl : hag o veza kemeret eur vouhal, e trohas eur skourr gwezenn, hag o veza e lakaet war e skoaz e lavaras d'ar re a oa gantañ : Ar pez hoh-eus va gwelet oh ober, grit hen raktal.

84. Troha a rejont eta gwell pe well skourrou gwez, hag ez ejont war-lerh penn o arme. Hag i, o veza lakaet ar heuneud en-dro d'ar hreñv²⁵³, a lakaas an tan ennañ : hag e c'hoarvezas penaoz mil den, ken gwazed, ken merhed, pere a chome e tour Sichem, a oe lazet pe gand an tan, pe gand ar moged.

85. Hogen Abimelek o vond kuit ahano a zeuas etrezeg kêr Teber, a gelhias hag a hronnas gand e arme.

86. Hogen bez' e oa eun tour uhel-braz e-kreiz kêr, e pehini e oa tehet ar wazed hag ar merhed, hag oll briñsed kêr ; ha goude beza serret kloz an nor, i a oa en em dennet war lein an tour evid en em zivenni eno.

87. Hag Abimelek, o vond etrezeg an tour, a stourme kaer ; hag o tostaad ouz an nor, e klaske lakaad an tan ennañ.

88. Ha setu eur vaouez o teurel diwar laez eun darn mên milin, a skoas war benn Abimelek, hag a dorras e glopenn dezañ.

89. Hag eñ a halvas raktal e floh, hag a lavaras dezañ : Tenn da gleze, ha laz ahanon ; gand aon na ve lavaret penaoz on bet lazet gand eur vaouez. Hag hemañ o senti outañ, hen lazaz.

90. Ha pa oe maro, ar re oll euz a Izrael a oa gantañ, a zistroas pep hini d'e gêr :

91. Ha Doue a zistaolas da Abimelek an droug en-doa greet a-eneb e dad, o laza e zeg breur ha tri-ugent.

92. Distaolet e oe ivez d'ar Sichemited an droug o-doa greet ; ha malloz Joatam, mab Jerobaad, a gouezas warnezo.

Pennad

Bugale Izrael a gouez dindan beli ar Filistined hag an Ammonited.

1. Goude Abimelek e oe lakaet e penn bugale Izrael Tola, mab Fua, contr Abimelek, den euz a vreuriez Isakar, pehini a chome e Samir, e menez Efraim.
2. Hag eñ a varnas Izrael e-pad tri bloaz warn-ugent ; hag e varvas, hag e oe beziet e Samir.
3. Ha goude hemañ e savas Jair euz a Halaad, pehini a varnas Izrael e-pad daou-vloaz warn-ugent.
4. Tregont mab en-doa a bigne war tregont ebeul azenez, ha priñsed e oant war tregont kêr e bro Galaad, pere a zo anvet bete-vremañ euz e ano Havot-Jair, da lavaroud eo, kêriou Jair.
5. Ha Jair a varvas, hag a oe beziet el leh anvet Kamon.
6. Hogen bugale Izrael, o lakaad pehejou nevez war pehejou koz, a reas an droug dirag an Aotrou, hag a zervijas an idolou, ha Baalim hag Astarot, ha doueed ar Siria ha Sidon, ha Moab, ha mibien Ammon, hag ar Filistined : dilezel a rejont an Aotrou, ha ne gaeljont mui anezañ.
7. An Aotrou o vond droug ennañ en o eneb, o lakaas etre daouarn ar Filistined ha mibien Ammon.
8. Hag ar re anezo a chome en tu all d'ar Jourdan, e douar an Amorreed, a zo e Galaad, a oe glaharet ha gwasket-braz e-pad triweh vloaz.

²⁵³ d'ar hreñv : ar hreñv-leh.

9. En heveleb doare ma treuzas mibien Ammon ar Jourdan, ha ma wastjont douarou Juda, ha Benjamin, hag Efraim ; hag Izrael a oe gwall hlaharet.
10. Ha bugale Izrael o harmi etrezeg an Aotrou, a lavaras : Pehet on-eus en da geñver, o veza ma on-eus dilezet an Aotrou on Doue, ha ma on-eus servijet Baalim.
11. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : An Ejiptianed, hag an Amorroed, ha mibien Ammon, hag ar Filistined,
12. Hag ar Sidonied, hag an Amalekited, hag ar Hananeed ha n'o-deus ket-i gwasket warnoh ; ha pa hoh-eus garmet etrezeg ennon, ha n'em-eus ket ho tennet euz o daouarn ?
13. Ha koulskoude hoh-eus va dilezet, hag hoh-eus kaelet doueed a-ziavêz : rag-se n'ho tennin mui er-mêz a boan.
14. It, ha galvit an doueed hoh-eus dilennet ; ra zieubint-i ahanoh e amzer ar hlahar.
15. Ha bugale Izrael a lavaras d'an Aotrou : Pehet on-eus : gra deom ar pezh a giri ; on diboan hepken bremañ.
16. Hag o lavaroud kement-se, e taoljont er-mêz euz o douarou idolou an doueed a-ziavêz, hag i a zervijas an Aotrou Doue, pehini en-doe truez ouz o reuziou.
17. Koulskoude mibien Ammon gand garmou braz a zisplegas o zellou e Galaad : ha bugale Izrael o veza en em strollet en o eneb, a lakaas o hamp e Masfa.
18. Ha priñsed Galaad a lavaras an eil d'egile : Ar henta ahanom a zeuio da stourmi ouz mibien Ammon, a vezo e penn pobl Galaad.

Pennad.

Jefte, barner e Izrael. E ouestl dievez.

1. En amzer-ze ez oa eun den euz a Halaad anvet Jefte, den a-vrezel ha kaloneg-braz, mab eur hast, hag en-doe da dad Galaad.
2. Hogen Galaad en-doa e wreg, a behini en-doa bet bugale pere pa oent deuet braz, a lakaas Jefte er-mêz, o lavaroud : Ne hellez ket beza da her e ti on tad, o veza ma out bet ganet euz a eur vamm all.
3. Jefte o tehoud hag o pellaad diouto, a chomas e bro Tob : ha tud dieneg²⁵⁴ ha douget d'al laeroñsi en em strollas war e dro, hag a yee war e lerh evel war-lerh o friñs.
4. En amzer-ze mibien Ammon a vrezeleke ouz Izrael.
5. Hag o veza ma oant stardet kaer ganto, henaoured Galaad a yeas da gavoud Jefte e bro Tob, evid goulenni e skoazell digantañ.
6. Hag i a lavaras dezañ : Deus ha bez da briñs deom, ha stourm ouz mibien Ammon.
7. Hag eñ a lavaras dezo : Ha n'eo ket c'hwi a gasae ahanon, hag hoh-eus va haset kuit euz a di va zad ; ha bremañ e teuit etrezeg ennon pa hoh-eus ezomm ahanon ?
8. Hag henaoured Galaad a lavaras da Jefte : Dre ze eo e teuom bremañ etrezeg ennout, evid ma teui ganeom, ha ma stourmi ouz mibien Ammon, ha ma vezi e penn ar re oll a chom e Galaad.
9. Ha Jefte a lavaras dezo : Mar deo gwir penaoz oh deuet d'am havoud evid ma stourmin evidoh ouz mibien Ammon, ha ma ho laka an Aotrou etre va daouarn, ha bez' e vin da briñs deoh ?
10. Hag i a lavaras dezañ : An Aotrou, pehini a glev kement-mañ, a zo e-unan da hanterour ha da dest, penaoz e talhim or ger.

²⁵⁴ tud dieneg : tud en dienez, ha n'o-deus netra.

11. Jefte a yeas eta gand henaoured Galaad, hag ar bobl oll hel lakaas da briñs warnezo. Ha Jefte en-doa greet e oll lavarou dirag an Aotrou e Masfa.
12. Hag eñ a gasas kannaded da roue mibien Ammon, evid lavaroud dezañ euz e berz : Petra a zo etre te ha me, evid ma teuez²⁵⁵ em eneb, ha ma wastez²⁵⁶ va douar ?
13. Ha roue mibien Ammon a lavaras d'ar gannaded : O veza ma en-deus Izrael kemeret va bro, pa eo pignet euz an Ejipt, adaleg harzou Arnon beteg Jabok, ha beteg ar Jourdan : hogen distaol hi din bremañ gand ar peoh.
14. Jefte o hasas adarre, hag a gemennas dezo lavaroud da roue mibien Ammon :
15. Setu petra a lavar Jefte : N'en-deus kemeret Izrael na bro Moab, na bro mibien Ammon :
16. Hogen pa bignas euz an Ejipt, e kerzas dre an distro beteg ar mor Ruz, hag e teuas da Gadez.
17. Hag Izrael a gasas kannaded da roue Edom, evid lavaroud : Va lez da dremenoud dre da vro. Ha roue Edom ne fellas ket dezañ e ve greet ar pezh a houlenne. Hag Izrael a gasas ivez etrezeg roue Moab, pehini a zinahas o lezel da dremenoud. Izrael a chomas eta e Kadez.
18. Hag o veza greet an dro euz a vro Edom, e teuas war-zu ar sav-heol euz a vro Moab, hag e tisplegas e deltou en tu all da Arnon : ha ne fellas ket dezañ mond en diabarz euz a harzou Moab ; rag Arnon a zo harzou bro Moab.
19. Izrael a gasas ivez kannaded da Zehon, roue an Amorreed, pehini a chome e Hesebon, evid lavaroud dezañ : Va lez da dremenoud dre da vro beteg ar ster.
20. Hogen Sehon o tisprizoud ivez goulenn Izrael, n'e lezas ket da dremenoud dre e harzou : hag o veza strollet eul lod braz a vrezilidi, e kerzas ouz Izrael e Jasa, hag ez enebas kaer outañ.
21. Hogen an Aotrou a lakaas Sehon gand e oll arme etre daouarn Izrael, pehini hen trehas hag a gemeras oll zouarou an Amorreed a chome er vro-ze,
22. Hag o oll zouarou, adaleg Arnon beteg Jabok, hag adaleg an distro beteg ar Jourdan.
23. An Aotrou, Doue Izrael, a drehas eta an Amorreed pa stourme outo Izrael e bobl²⁵⁷ ; hag e fell dit bremañ beza perhenn en e zouar ?
24. Ha n'eo ket dleet dit gand reiz ar pezh a zo da Gamor da zoue ? Evel-se ar pezh en-deus gounezet an Aotrou on Doue pa eo bet treh, a gouez en or herz.
25. Ha gwelloc'h out eged Balak, mab Sefor, roue Moab ? Pe ha te a hell diskoueza penaoz eo en em glemmet ouz Izrael, hag en-deus stourmet outañ,
26. Pa chome e Hesebon, hag en he bourhiou, hag e Aroer, hag en he bourhiou, pe en oll gêriou a-hed ar Jourdan, e-pad tri-hant vloaz ? Perag e-keit an amzer-ze n'hoh-eus-hu greet netra diwar-benn ar goulenn-ze ?
27. Rag n'eo ket me a beh ouzit, hogen te eo a ra droug em eneb, oh ober e gaou ar brezel ouzin. Ra vezo hirio an Aotrou da varner ha da hanterour etre Izrael ha mibien Ammon.
28. Roue mibien Ammon ne fellas ket dezañ aotrea ar pezh en-doa goulennet Jefte digantañ gand e gannaded.
29. Neuze spered an Aotrou a yeas war Jefte, hag oh ober an dro euz a Halaad, euz a Vanase, hag euz a Vasfa euz a Halaad, e tremenas da vro mibien Ammon ;
30. Ha Jefte a reas ar gouestl d'an Aotrou, o lavaroud : Mar lakaez mibien Ammon etre va daouarn,

²⁵⁵ teuez : "ma teufes" a vefe gwelloc'h.

²⁵⁶ wastez : "ma wastfes" a vefe gwelloc'h.

²⁵⁷ Izrael e bobl : "pobl Izrael" e gwirionez.

31. Ar henta a zeuio er-mêz euz va zi, hag a yelo war va arbenn pa zistroin gand ar peoh euz a vro mibien Ammon, a ginnigin d'an Aotrou e sakrifis-losk.
32. Ha Jefte a dremenas da vro mibien Ammon evid stourmi outo : hag an Aotrou o lakaas etre e zaouarn.
33. Hag eñ a drehas anezo adaleg Aroer beteg ma teuer da Vennit, e ugent kêr ; ha beteg Abel a zo diazezet er giwninennou, gand eul lazerez braz-meurbed ; ha mibien Ammon a oe izellaet gand bugale Izrael.
34. Hogen pa zistroe Jefte euz a Vasfa d'e di, e verh pennherez, rag n'en-doa bugel all ebed, a yeas war e arbenn gand taboulinou ha dañsou :
35. Pa welas Jefte anezi, e rogas e zillad, hag e lavaras : Allaz, me a zo reuzeudig, va merh, va zaouzanet eh-eus, hag en em zaouzanet out da-unan : rag digoret em-eus va genou etrezeg an Aotrou, ha ne hellan ket ober eun dra all.
36. Hag hi a lavaras dezañ : Va zad, ma eh-eus digoret da henou etrezeg an Aotrou, gra din ar pez eh-eus gouestlet da ober, pa eo bet aotreet dit ar veñjañs hag an treh war da enebourien. Hag hi a lavaras c'hoaz d'he zad : Gra din hepken ar pez a houlennin diganez : Va lez da vond e-pad daou viz war ar menezioù evid ma ouelin war va gwerhted gand va mignonezed.
37. Hag eñ a lavaras dezi : Kee, hag eñ a lezas anezi da vond e-pad daou viz. Ha pa oe eet gand heh eiled hag he mignonezed, e ouelas war he gwerhted war ar menezioù.
38. Ha pa oe tremenet an daou viz e tistroas-hi etrezeg he zad ; hag eñ a reas dezi evel m'en-doa gouestlet : hag hi ne anavezaz gwaz ebed. Ahano e teuas ar boaz en Izrael, hag a zo bet miret abaoe,
39. Ma en em zastum kevred merhed Izrael ha ma ouelont da verh Jefte euz a Halaad e-pad pevar devez.

Pennad.

Dispah a-eneb Jefte. E varo.

1. Hogen eun dispah a zavas en Efraim, ha tud ar vreuriez-se o tremenoud war-zu an hanternoz, a lavaras da Jefte : Perag pa out eet da stourmi ouz mibien Ammon, n'eo ket fellet dit or gervel da vond ganez ? Entana raim eta da di.
2. Ha Jefte a lavaras dezo : Eur striv braz a oa etre me ha va fobl ha mibien Ammon : ho kalvet em-eus evid rei skoazell din, he n'eo ket fellet deoh he rei.
3. Pa em-eus gwelet kement-se, em-eus lakaet va buhez etre va daouarn, em-eus kerzet ouz mibien Ammon, hag an Aotrou en-deus o lakaet etre va daouarn. Penaoz em-eus-me dellezet e teufeh da zével em eneb evid stourmi ouzin ?
4. Jefte eta o veza galvet a-du gantañ oll dud Galaad, a stourmas ouz Efraim : ha tud Galaad a drehas re Efraim, o veza m'o-doa lavaret : Galaad a zo eun treher euz a Efraim, hag a chom e-kreiz Efraim ha Manase.
5. Hag ar Halaadied a gemeras gouevioù²⁵⁸ ar Jourdan, dre bere e tlee distrei an Efraimied. Ha pa zeue etrezeg eno unan euz a Efraim a dehe hag a lavare : Va lez, me az ped, da dreuzi ; ar Halaadied a lavare dezañ : ha n'out ket Efratead ? ma lavare : n'on ket ;
6. E lavarent dezañ : lavar eta Schibbolet, da lavaroud eo eur penn-ed. Hag eñ a lavare Sibbolet, hag ar ger-ze ne oa ket da lavaroud eur penn-ed : raktal e krogent ennañ hag e vougant anezañ e-kreiz ar Jourdan. Hag i a lazaz en amzer-ze daou vil warn-ugent euz a dud Efraim.

²⁵⁸ gouevioù : roudourioù.

7. Jefte euz a Halaad a varnas eta Izrael²⁵⁹ a-hed c'hweh vloaz : hag eñ a varvas, hag a oe beziet en e gêr Galaad.
8. Goude hemañ, Abesan, euz a Vetlehem, a varnas Izrael²⁶⁰.
9. Bez' en-doe tregont mab, ha kemend-all a verhed, pere a zimezas er-mêz euz ar gêr ; ha kemend-all a wragez a roas d'e vibien. Hag eñ a varnas Izrael²⁶¹ a-hed seiz vloaz :
10. Hag eñ a varvas, hag a oe beziet e Betlehem.
11. Goude hemañ e oe barner Ahialon, euz a Zabulon : hag eñ a varnas Izrael e-hed deg vloaz :
12. Hag eñ a varvas, hag a oe beziet e Zabulon.
13. Goude hemañ Abdou, mab Ilel, euz a Faraton, a varnas Izrael.
14. Bez' en-doe daou-ugent mab, ha tregont mab-bihan deuet diouto, pere a bigne war deg ebeul ha tri-ugent a azenez : hag eñ a varnas Izrael a-hed eiz vloaz :
15. Hag eñ a varvas, hag a oe beziet e Faraton, e bro Efraim, war menez Amalek.

Pennad.

Bugale Izrael dindan beli ar Filinistined. Ganedigez Samson.

1. Ha bugale Izrael a reas c'hoaz droug dirag an Aotrou, pehini o lakaas etre daouarn ar Filinistined e-pad daou-ugent vloaz.
2. Hogen bez' e oa eun den euz a Zaraa, hag euz a ouenn Dan, anvet Manue, pehini en-doa eur wreg vrehagn.
3. Hag êl an Aotrou en em ziskouezas dezi, hag a lavaras dezi : Brehagn out hag heb bugale ; hogen te a engehento hag a hano eur mab.
4. Laka evez na evi na gwin na bier, ha na zebri netra a zihlan ;
5. Rag te a engehento hag a hano eur mab, war penn pehini n'ez ay ket eun aotenn : rag Nazeread Doue e vezo adaleg e vugaleaj hag adaleg kov e vamm, hag eñ a zeuio da denna Izrael euz a zaouarn ar Filinistined.
6. Houmañ a zeuas da gaoud heh ozah, hag a lavaras dezañ : Eun den Doue a zo deuet d'am havoud, hag eñ dezañ doare eun êl, euzuz-braz. Ha pa em-eus goulennet digantañ piou e oa, hag a beleh e teue, ha pe ano en-doa, n'eo ket fellet dezañ e lavaroud din.
7. Hogen setu petra en-deus lavaret : Te a engehento hag a hano eur mab : laka evez na evi na gwin na bier, ha na zebri netra a zihlan : rag Nazeread Doue e vezo ar bugel adaleg e vugaleaj, hag adaleg kov e vamm beteg deiz e varo.
8. Manue a bedas eta an Aotrou hag a lavaras : Da bedi a ran, o ! Aotrou, ma teuy adarre an den Doue eh-eus degaset ha ma tesko deom petra a dleom da ober euz ar bugel a dle beza ganet.
9. Hag an Aotrou a glevas ouz pedenn Manue, hag êl an Aotrou en em ziskouezas adarre d'e wreg pa edo azezet en eur park. Hogen Manue, heh ozah, ne oa ket ganti. Ha pa he-doe-hi gwelet an êl,
10. E redas raktal da gavoud heh ozah, hag e roas da anaoud dezañ, o lavaroud : Setu eo en em ziskouezet din an den em-boa gwelet kent.
11. Ha Manue a zavas, hag a yeas war-lerh e wreg : hag o veza deuet etrezeg an den, e lavaras dezañ : Ha te eo eh-eus komzet ouz ar wreg-mañ ? Hag eñ a lavaras : Me eo.

²⁵⁹ a varnas eta Izrael : a oe barner e Izrael.

²⁶⁰ a varnas Izrael : a oe barner en Izrael.

²⁶¹ eñ a varnas Izrael : a oe barner en Izrael.

12. Ha Manue a lavaras dezañ : Pa vezo sevenet da her, petra a fell dit e raje ar bugel ?
Ha petra a ranko e zioueri ?
13. Hag êl an Aotrou a lavaras da Vanue : Ra ziouero kement em-eus lavaret d'az kwreg :
14. Na zebret netra euz a gement a zeu euz ar winienn, nag evet na gwin na bier, ha na zebret netra a zihlan ; ha sevenet ha miret ar pezh em-eus gourhemennet dezi.
15. Ha Manue a lavaras da êl an Aotrou : Aotre din, me az ped, ar pezh a houlenin diganez, ma aozim dit eur menn-gavr.
16. Hag an êl a lavaras dezañ : Ha pa bedfes stard ahanon, ne zebrin euz da vara : hogen mar fell dit ober eur sakrifis-losk, kinnig eñ d'an Aotrou. Ha Manue ne ouie ket penaoz²⁶² e oa êl an Aotrou.
17. Hag eñ a lavaras d'an êl : Pe ano out, evid, pa vo sevenet da her, ma eñvorim ahanout ?
18. Hag an êl a lavaras dezañ : Perag e klaskez-te va ano, pa eo estlmamuz ?
19. Manue a gemeras eta ar menn-gavr, hag ar braoued-kinnig : hag e lakaas anezo war eur mên, oh o hinniga d'an Aotrou pehini a ra burzudou : hogen eñ hag e wreg a zelle.
20. Ha pa zavas flamm an aoter etrezeg an neñv, êl an Aotrou a zavas ivez er flamm. Ha pa welas Manue hag e wreg kement-se, en em strinkjont d'an douar war o genou ;
21. Hag êl an Aotrou n'en em ziskouezas mui dezo. Ha Manue a vennas raktal penaoz e oa êl an Aotrou.
22. Hag eñ a lavaras d'e wreg : Mervel a raim evid gwir, rag gwelet on-eus Doue.
23. Hag e wreg a lavaras dezañ : Ma ve bet fellet d'an Aotrou ol laza, n'en-divije ket degemeret euz on daouarn ar sakrifis-losk hag ar braoued-kinnig, ha n'en-divije ket diskouezet deom an oll draou-ze, na diouganet ar pezh a dle c'hoarvezoud.
24. Ar wreg a hanas eta eur mab, hag a halvas anezañ Samson. Ar bugel a greskas, hag an Aotrou a vennigas anezañ.
25. Ha spered an Aotrou a zeuas da veza gantañ e kamp Dan, etre Saraa hag Estaol.

Pennad

Samson a laz eul leon.

1. Ha Samson a ziskennas da Damnata ; hag o veza gwelet eno eur vaouez e-touez merhed ar Filinistined,
2. E pignas, hag e roas da anaoud d'e dad ha d'e vamm, o lavaroud : Gwelet em-eus eur vaouez e Tamnata e-touez merhed ar Filinistined : ro hi din da wreg, me az ped.
3. E dad hag e vamm a lavaras dezañ : Ha n'eus ket a vaouez e-touez merhed or breudeur, hag e-kreiz on oll bobl, evid ma fell dit kemeroud eur wreg e-touez ar Filinistined, pere a zo diemwadet ? Ha Samson a lavaras d'e dad : Ro hi din ; rag plijet he-deus din pa em-eus he gwelet.
4. Hogen e dud ne ouient ket penaoz e teue kement-mañ a-berz an Aotrou, ha penaoz e klaske eun abeg a-eneb ar Filinistined : rag en amzer-ze ar Filinistined o-doa galloud war Izrael.

²⁶² penaoz : Ha Manue ne ouie ket e oa hennez êl an Aotrou.

5. Samson a ziskennas eta gand e dad hag e vamm da Damnata. Ha pa oent deuet da winiennou kêr, en em ziskouezas eul leon yaouank hag eñ fero hag o yuda, hag a zeuas etrezeg Samson.
6. Hogen spered an Aotrou a grogas e Samson, hag eñ a ziskolpas al leon, oh e zispenna evel eur menn-gavr, petra bennag n'en-doa netra en e zorn : ha ne fellas ket dezañ lavaroud kement-se d'e dad ha d'e vamm.
7. Hag eñ a ziskennas, hag a gomzas gand ar vaouez he-doa plijet dezañ.
8. Hag a-benn eun nebeud deveziou pa zistroe evid he hemeroud da wreg, e tistroas diwar e hent evid gweled korv maro al leon ; ha setu e kavas eun hed-gwenan hag eun direnn-vel e genou al leon.
9. He hemeroud a reas en e zaouarn, hag e tebre en eur gerzoud : hag o tond etrezeg e dad hag e vamm, e roas lod dezo, hag i a zebras ; hogen ne fellas ket dezañ disklêria dezo penaoz en-doa kemeret ar mel e korv al leon.
10. An tad a ziskennas eta da gavoud ar vaouez, hag a reas eur banvez d'e vab ; rag ar hiz e oa evel-se e-touez an dud yaouank.
11. Pa oe gwelet gand tud al leh-se, e rojont dezañ tregont den yaouank evid mond gantañ.
12. Ha Samson a lavaras dezo : Me a fell din rei deoh eul lavar goloet²⁶³ da enklaskoud : ma e zisplegit din e-pad ar seiz devez euz ar banvez, e roin deoh tregont lienenn²⁶⁴ ha kemend-all a zaeou :
13. Hogen ma ne hellit e zisplega, e root din tregont lienenn ha kemend-all a zaeou. Hag i a lavaras dezañ : Ro da lavar-goloet, ma her hlevim.
14. Hag eñ a lavaras dezo : Euz an hini a zebr eo deuet ar boued, hag euz an hini kreñv eo deuet an dra hwek : ha ne helljont ket, e-pad tri devez, displega al lavar-goloet.
15. Hogen pa dostae ar seizved deiz e leverjont da wreg Samson ; Gra lidou d'az ozah, ha laka eñ da zisklêria dit petra eo e lavar-goloet. Ma ne fell ket dit e ober, az tevim, te ha ti da dad : hag or galvet eh-eus-te d'az eured evid on diwiska ?
16. Houmañ ne ree nemed gouela dirag Samson, hag en em glemme, o lavaroud : Va hasaad a rez, ha n'am harez ket : dre ze eo ne fell ket dit displega al lavar-goloet eh-eus roet da vibien va fobl. Hag eñ a lavaras : N'eo ket fellet din e lavaroud d'am zad na d'am mamm ; ha me a hellfe e lavaroud dit ?
17. Gouela a reas eta hi dirazañ e-pad ar seiz devez a vanvez : en diwez ar seizved deiz goude beza bet rehet ganti, e zisklêrias dezi. Hag hi raktal e roas da anaoud d'he henvroiz.
18. Hag ar re-mañ a lavaras dezañ ar seizved deiz a-barz kuz-heol : Petra a zo c'hwekoh eged ar mel, ha petra a zo kreñvoh eged al leon ? Hag eñ a lavaras dezo : Ma n'ho-pe ket aret gand va onner, n'ho-pije ket kavet va lavar-goloet.
19. Ha spered an Aotrou a grogas e Samson, hag eñ a ziskennas da Askalon, hag a lazas eno tregont den : hag o veza kemeret o dillad, e roas anezo d'ar re o-doa displeget e lavar-goloet. Hag o vond droug ennañ e pignas da di e dad.
20. Koulskoude e wreg a zimezas gand unan euz he mignoned, hag euz ar re a oa bet en heh eured.

Pennad.

Samson a zev ed ar Filinistined. Mil Filistin a laz gand karvan eun azen.

²⁶³ eul lavar goloet : eun divinadell, eun dra diêz da zivinoud.

²⁶⁴ lienenn : roched.

1. Hogen nebeud amzer goude, pa dostae ar pred da vedi ar gwiniz, o veza deuet c'hoant da Zamson da weloud e wreg, e teuas hag e tougas dezi eur menn-gavr. Ha pa venne gantañ mond e-barz he hambr evel ma oa boazet da ober, he zad a viras outañ, o lavaroud :
2. Mennet em-eus penaoz ez-poa kas outi, ha rag-se em-eus he roet da unan euz da vignoned : hogen eur hoar he-deus hag a zo yaouankoh ha kaerroh eviti ; kemer hi da wreg en he leh.
3. Ha Samson a lavaras dezañ : Hiviziken ar Filinistined n'o-devo netra da damalloud din : rag me a raio droug dezo.
4. Mond a reas hag e kemeras tri-hant louarn, hag o stagas daou-ha-daou lost-ouzelost, hag ez ereas goulaouennou braz etrezo.
5. Ha goude beza lakaet an tan enno, e laoskas al lern, evid ma redjent tu-mañ tu-hont. Ar re-mañ a yeas raktal a-dreuz da edou ar Filinistined, e pere e lakejont an tan ; hag an ed a oa ereet e malanou, hag an ed war droad, oll e oent devet : ha devet e oe ivez ar gwiniennou hag ar gwez olived.
6. Hag ar Filinistined a lavaras : Piou en-deus greet kement-se ? Ha lavaret e oe dezo : Samson eo, mab-kaer eun den euz a Damnata, pehini en-deus lamet e wreg digantañ evid he rei da unan all, en-deus greet kement-se. Hag ar Filinistined a bignas hag a zegas ar wreg gand he zad.
7. Ha Samson a lavaras dezo : Petra bennag ma hoh-eus greet evel-se, e fell din c'hoaz koulskoude en em veñji ahanoh, ha goude-ze e paouezin.
8. Hag eñ o zrehas hag a reas eul lazerez braz anezo ; en heveleb doare ma oent souezet braz, ha ma lakejont o garr war o morzed²⁶⁵. Ha Samson a ziskennas hag a yeas da chom e keo roh Etam.
9. Ar Filinistined eta a bignas e douar Juda hag a zisplegas o zeltou el leh a zo bet anvet a-houdevez Lec'hi, da lavaroud eo, Karvan, e peleh e oe trehet o arme.
10. Ha bugale Juda a lavaras dezo : Perag oh-hu pignet en on eneb ? Hag i a lavaras : Deuet om evid erea Samson hag evid disteurel dezañ an droug en-deus greet deom.
11. Tri mil den euz a vreuriezh Juda a ziskennas eta da geo roh Etam hag a lavaras da Zamson : Ha ne ouzout-te ket penaoz ar Filinistined o-deus galloud warnom ? Perag eh-eus-te greet kement-se ? Hag eñ a lavaras dezo : Evel ma o-deus greet din, em-eus greet dezo.
12. Deuet om, emezo, evid da erea, ha da lakaad ahanout etre daouarn ar Filinistined. Ha Samson a lavaras dezo : Touit, ha roit ho ker din ne lazot ket ahanon.
13. Hag i a lavaras : Ne lazim ket ahanout, hogen da erea a raim, hag e likiim ahanout etre o daouarn.
14. Hag i a ereas anezañ gand diou gordenn nevez, hag a zegasas anezañ euz a roh Etam.
15. Pa oe deuet eñ da leh ar Garvan, ha pa zeue ar Filinistined d'e gavoud en eur harmi, spered an Aotrou a grogas e Samson : hag evel ma losk al lin kerkent ha ma tosta an tan outañ, evel-se ar herdin gand pere e oa ereet a dorras hag en em zistagas.
16. Hag o veza kavet eur garvan, da lavaroud eo, eur garvan azen, a oa war an douar, e kemeras anezi hag e lazas ganti mil den.
17. Hag eñ a lavaras : Gand eur garvan azen, gand karvan ebeul eun azenez em-eus o zrehet hag em-eus lazot mil den.
18. Ha p'en-doe peurlavaret kement-se en eur gana, e taolas ar garvan euz e zorn hag a halv as al leh-se Ramat-Lechi, da lavaroud eo, krehenn ar garvan.

²⁶⁵ ma lakejont o garr war o morzed : penn-da-benn.

19. Hag o veza deuet da gaoud eur sehed braz, e harmas ouz an Aotrou hag e lavaras : Te eh-eus roet da zorn d'az servijer en dieub²⁶⁶ braz-mañ hag en treh : ha setu e varvan gand ar sehed hag e kouezin etre daouarn ar re ziemwadet.
20. An Aotrou eta a zigoras unan euz a gildent ar garvan azen, hag e tilammas dour anezañ. Hag eñ a evas, hag a wellaas d'e spered, hag a zistroas d'e nerz. Rag-se eo bet anvet al leh-se beteg-henn : feunteun ar garvan dre bedi Doue.
21. Ha Samson a varnas Izrael e deizioù ar Filinistined e-pad ugent vloaz.

Pennad.

Samson a gemer doriou Gaza. Dalila a droh e vleo dezañ. E varo.

1. Neuze Samson a yeas da Haza hag a welas eno eur vaouez hast ; hag ez eas d'he havoud.
2. Pa glevas ar Filinistined kement-se, ha ma teuas ar vrud en o zouez penaoz e oa deuet Samson e kêr, e kelhjont anezañ hag e lekejont gwarded ouz porz kêr : hag eno e hedjont anezañ didrouz a-hed an noz, evid e laza diñh ar mintin pa'z aje er-mêz.
3. Hogen Samson a gouskas beteg hanternoz : ha neuze o veza savet, e kemeras an diou zor gêr, gand o fostou hag o fotenn, hag o veza o lakaet war e ziskoaz, e tougas anezo war lein ar menez a zell ouz Hebron.
4. Goude-ze e karas eur wreg a chome e traonienn Sorek, hag a oa anvet Dalila.
5. Ha priñsed ar Filinistined a yeas d'he havoud hag a lavaras dezi : Touell anezañ ha desk dioutañ e peleh en em gav ennañ eun nerz ken braz, ha penaoz eh hellfem e drehi hag e heskina goude beza e ereet : ha mar grez kement-se, e roim dit pep hini unneg kant pezh arhant.
6. Ha Dalila a lavaras da Zamzon : Lavar din, me az ped, e peleh ema da nerz ker braz-se, ha gand pe liamm e ve red da erea, evid na hellfes ket e derri ?
7. Ha Samson a lavaras dezi : Ma ven ereet gand seiz kordenn greet gand nervennoù²⁶⁷, pere ne vijent ket c'hoaz seh, hogen a vije leiz, e vijen gwan evel ar wazed all.
8. Ha priñsed ar Filinistined a zegasas dezi seiz kordenn evel m'he-doa lavaret : hag i a eeras anezañ ganto ;
9. Hag o veza kuzet spierien en he zi, ar re-mañ a hortoze er gambr ma vije greet an taol ; hag hi a gias dezañ : Samson, setu ar Filinistined warnout. Hag eñ a dorras ar herdin, evel ma torrfe eun neudenn stoup pa dosta an tan outi : ha ne oe ket anavezet a betra e teue e nerz.
10. Ha Dalila a lavaras dezañ : Goap eh-eus greet ahanon, ha gevier eh-eus lavaret : bremañ da vihanna lavar din gand petra e ve red da erea.
11. Hag eñ a lavaras dezi : Ma ven ereet gand kerdin nevez, ha na ve c'hoaz greet netra ganto, e vijen dinerz hag heñvel ouz an dud all.
12. Dalila a ereas adarre anezañ ganto, ha goude beza kuzet spierien en he hambr, e krias : Samson, setu ar Filinistined warnout. Hag eñ a dorras ar herdin evel neud lien.
13. Ha Dalila a lavaras c'hoaz dezañ : Beteg pegeid e ri-te goap ahanon, hag e liviri gevier din ? Diskouez din gand petra e ve red da erea. Ha Samson a lavaras dezi : Mar gweez seiz blevenn euz va fenn gand neud steuenn, hag o veza o lakaet war-dro da eun tach, ma sankez hemañ en douar, e teuin da veza dinerz.

²⁶⁶ dieub : dieubidigez.

²⁶⁷ greet gand nervennoù : sañset "kordennou fresk".

14. Ha pa oe greet kement-se gand Dalila, e lavaras-hi dezañ : Samson, setu ar Filinistined warnout. Hag eñ o tihuna a dennas an tach er-mêz gand ar bleo hag an neud steuenn :
15. Ha Dalila a lavaras dezañ : Penaoz e levez-te e karez ahanon, pa n'ema ket da galon ganen ? Teir gwech eh-eus lavaret gevier din, ha n'eo ket fellet dit lavaroud din e petra ema da nerz vraz.
16. Hag o veza ma heskine anezañ ha ma en em zalhas e-pad meur a zeiz stag outañ, heb lezel gantañ ehan ebed, e fallaas e ene hag e teuas da veza skuiz-marro.
17. Neuze o tisklêria ar wirionez e lavaras dezi : N'eo tremenet biskoaz an houarn war va fenn, o veza ma on Nazaread, da lavaroud eo, ma on bet gouesttlet da Zoue e kov va mamm : mar bez touzet va fenn, va nerz a yelo diouzin, hag e teuin da veza gwan evel an dud all.
18. Dalila o weloud penaoz en-doa-eñ disklêriet kement a oa en e galon, a gasas etrezeg priñsed ar Filinistined evid lavaroud dezo : Pignit c'hoaz eur wech, rag digoret en-deus bremañ e galon din. Ar re-mañ a bignas eta hag a zegasas an arhant o-doa lavaret e rojent.
19. Hag hi a lakaas anezañ da gousked war he daoulin, ha da harpa e benn war heh askre-hi. Hag hi a halvass eun touzer, hag a lakaas troha e zeiz kuchenn vleo ; hag e teuas d'her has kuit ha d'e bellaad diouti : rag e nerz a oa eet raktal dioutañ :
20. Hag hi a lavaras dezañ : Samson, setu ar Filinistined warnout. Hag eñ o tihuna a lavarass ennañ e-unan : En em denna a rin ahanon evel ma em-eus greet kent, hag e vezin dieubet ; rag ne ouie ket penaoz e oa en em dennet an Aotrou dioutañ.
21. Pa o-doe ar Filinistined e gemeret, e tennjont e zaoulagad euz e benn, ha goude beza e ereet gand chadennou, e kasjont anezañ da Haza ; hag o veza e zerret er vah, hel lakejont da drei ar vreo.
22. Koulskoude e vleo a zeue da greski.
23. Ha priñsed ar Filinistined en em zastumas oll evid laza ostivou kaer da Zagon o Doue hag evid banveza, o lavaroud : On Doue en-deus lakaet etre on daouarn on enebour, pehini en-deus gwastet or bro ha lazet kalz ahanom.
24. Pa welas ar bobl kement-se, e veuljont ivez o Doue, o lavaroud evelto : On Doue en-deus lakaet etre on daouarn on enebour, pehini en-deus gwastet or bro ha lazet kalz ahanom.
25. Hag i en em laouenas o banveza, ha pa oe greet o banvez, e hourhemennjont gervel Samson evid ma c'hoarije dirazo. Ha Samson o veza bet degaset euz ar vah, a hoarie dirazo : hag i a lakaas anezañ en e zav etre daou beul.
26. Ha Samson a lavarass d'ar paotr a vlenie anezañ : Va lez da lakaad va daouarn war ar peulioù a zoug an ti oll, evid ma harpin warnezo, ha ma tiskuizin eun nebeud.
27. Hogen an ti a oa leun a wazed hag a verhed, hag oll briñsed ar Filinistined a oa eno : hag euz a lein an doenn ez oa war-dro tri mil den a beb reiz a zelle ouz Samson o c'hoari.
28. Hogen eñ o hervel an Aotrou, a lavarass : Aotrou Doue, az-pezh soñj ahanon, adro din bremañ, va Doue, va nerz kenta, evid ma en em veñjin euz va enebourien ha ma tistaolin dezo en eur wech ar pezh a zellezont evid ar holl euz va daoulagad.
29. Hag o kemeroud an daou beul war bere edo douget an ti, hag o terhel unan anezo gand e zorn dehou hag egile gand e zorn kleiz,
30. E lavarass : Ra gollin va buhez gand ar Filinistined : hag o veza hejet kreñv ar peulioù, e kouezas an ti war an oll briñsed ha war ar re all euz ar bobl a oa eno : hag eñ a lazass kalz muioh anezo en eur vervel, eged n'en-doa lazet endra ma oa beo.

31. Hogen e vreudeur hag e oll gerent o veza diskennet di a gemeras e gorv, hag a vezias anezañ etre Saran hag Estaol, e bez e dad Manue. Hag eñ a varnas Izrael e-pad ugent vloaz.

Pennad.

Idol ti Mikas.

1. En amzer-ze e oe eun den euz a venez Efraim anvet Mikas,
2. Pehini a lavaras d'e vamm : An unneg pezh arhant ez-poa lakaet a-du evidout, ha diwar-benn pere ez-poa touet dirazon, setu em-eus i, hag em zi emaint. Hag hi a lavaras dezañ : Ra vezi benniget, va mab, gand an Aotrou.
3. Mikas o roas eta d'e vamm, pehini he-doa lavaret dezañ : Sakret ha gouestlet em-eus an arhant-se d'an Aotrou, evid ma e zegemero va mab euz va dorn, ha ma ray gantañ eur skeudenn gizellet ha teuzet : ha bremañ e roan dit.
4. O²⁶⁸ rei a reas eta d'e vamm : hag hi a gemeras daou-hant pezh arhant, hag o roas da eun arhanter evid ober ganto eur skeudenn gizellet hag unan deuzet, a chomas e ti Mikas.
5. Ober a reas ivez Mikas eun templig ennañ evid an Doue, gand eun efod, ha terafimou²⁶⁹, da lavaroud eo, ar zae a veleg hag an idolou : hag eñ a gargas dorn unan euz e vibien, hag hel lakaas da veleg dezañ.
6. En amzer-ze ne oa roue ebed en Izrael, hogen pep hini a ree evel ma kave dezañ ez oa mad.
7. Bez' ez oa ivez eun den yaouank all euz a Vetlehem Juda, euz e gerentiez, pehini a oa Levit hag a chome eno.
8. Eet e oa er-mêz euz a gêr Betlehem evid mond e pirhirinded ha chom el leh ma kavje mad. Ha pa oa deuet da venez Efraim pa edo en hent, e titroas eun nebeud etrezeg ti Mikas.
9. Ha Mikas a houlenas digantañ a beleh e teue. Hag eñ a lavaras : Levit on euz a Vetlehem Juda, hag e kerzan evid chom el leh ma hellin ha ma kavin gwella.
10. Ha Mikas a lavaras dezañ : Chom em zi, ha bez din da dad ha da veleg : ha me a roio dit beb bloaz deg pezh arhant ha diou zae hag ar pezh a zo red evid beva.
11. Al Levit a roas e hrad hag a chomas e ti Mikas, hag e oe eno evel unan euz e vibien.
12. Ha Mikas a gargas e zorn, hag a viras an den yaouank da veleg en e di,
13. O lavaroud : Bremañ eh ouzon penaoz e ray Doue vad din, pa em-eus eur beleg euz a ouenn Levi.

Pennad.

Mibien Dan a skrap idol Mikas, hag a gas ganto e Levit.

1. En deziou-ze ne oa ket a roue en Izrael, ha breuriez Dan a glasse douarou evid chom enno : rag beteg an deiz-se n'he-doa ket bet he lod gand ar breuriezou all.
2. Bugale Dan a gasas eta euz a Saraa hag euz a Estaol pemp den kaloneg-braz euz o gouenn hag euz o herentiez, evid spia ar vro ha lakaad evez mad outi ; hag i a lavaras dezo : It, hag evesait ouz ar vro. Ar re-mañ o veza eet en hent a zeuas da venez Efraim, hag o veza eet e ti Mikas, eh ehanjont eno.

²⁶⁸ O : uheloh "e" (unander), ha bremañ "o" (liester).

²⁶⁹ terafimou : ?

3. Hag i a anavezas al Levit yaouank dioh e vouez, hag o veza chomet gantañ, e leverjont dezañ : Piou en-deus da gaset amañ ? Petra a rez amañ ? Da betra eo bet fellet dit dond amañ ?
4. Hag eñ a lavaras dezo : Evel-henn hag evel-henn en-deus greet Mikas din ; ha gobr en-deus roet din evid ma vezin da veleg dezañ.
5. Neuze ar re-mañ a bedas anezañ da gemeroud kuzul digand an Aotrou, evid ma'h hellfent gouzoud hag i a vije eüruz en o hent hag a zeuje a-benn euz o dezo.
6. Hag eñ a lavaras dezo : It e peoh ; an Aotrou a zell ouz hoh hent hag ouz hoh ergerz.
7. Ar pemp den eta a yeas hag a zeuas da Lais ; hag i a welas ar bobl a chome er gêr-ze, hervez boaz ar Sidoned, heb aon ebed, e peoh, hag e fiziañs, heb enebour ebed, pinvidig-braz, pell euz a Zidon, ha rannet dioh an dud all.
8. O veza distroet etrezeg o breudeur e Saraa hag e Estaol, ha pa houlenas ar re-mañ diganto petra o-doa greet, e leverjont dezo :
9. Savit, ha pignom etrezeg enno : rag ni on-eus gwelet eur vro binvidig-vraz ha strujuz : bezit war evez, na zaleit ket ; deom da gemeroud anezi, n'or-bezo poan ebed.
10. Mond a raim e-touez tud leun a fiziañs, en eur vro ehon-vraz, hag an Aotrou a roio deom al leh-se, e pehini ne ziouer netra euz a gement a gresk war an douar.
11. Mond a reas eta euz a vreuriezh Dan, da lavaroud eo, euz a Zaraa hag euz a Estaol, c'hweh-kant den armet evid ar brezel.
12. Hag i a bignas hag a stignas o hamp e Kariatiarim Juda : hag abaoe neuze al leh-se a zo bet anvet kamp Dan ; hag eñ a zo a-dreñv Kariatiarim.
13. Ahano e tremenjont da venez Efraim : ha pa oent deuet da di Mikas,
14. Ar pemp den a oa bet kaset kent evid evesaad ouz bro Lais, a lavaras d'o breudeur all : C'hwi a oar penaoz en tiez-se ez eus eun efod ha terafimou, hag eur skeudenn gizellet, hag unan deuzet : gwelit petra a fell deoh da ober.
15. Hag i, o veza en em zistroet eun nebeud, a yeas e ti al Levit yaouank, a oa e kêr Mikas ; hag e leverjont deiz-mad dezañ.
16. Hogen ar c'hweh-kant den, pere a oa o armou ganto, a chomas e-tal an nor.
17. Hag ar re a oa eet e-barz ti an den yaouank a lakae o foan evid kas ganto ar skeudenn gizellet, hag an efod, hag an terafimou, hag ar skeudenn deuzet ; hag ar beleg a oa en e zav e-tal an nor, gand ar c'hweh-kant den kaloneg a oa o hortozino.
18. Ar re eta a oa eet e-barz a gasas ganto ar skeudenn gizellet, hag an efod, hag an idolou, hag ar skeudenn deuzet. Hag ar beleg a lavaras dezo : Petra a rit-hu ?
19. Hag i a lavaras dezañ : Tao, ha laka da viz war da henou : ha deus ganeom, evid ma or-bezo ahanout da dad ha da veleg. Pehini eo ar gwella dit, pe beza beleg e ti eun den e-unan, pe en eur vreuriezh hag en eun tiad e Izrael ?
20. Al Levit o klevoud kement-se, a roas e hrad d'o lavar ; hag o kemeroud an efod, hag an idolou, hag ar skeudenn gizellet, ez eas kuit ganto.
21. Pa edo ar re-mañ en hent, ha pa o-doa lakaet da vond en o raog ar vugale, al loened ha kement o-doa a wella,
22. Ha pa oant dija pell dioh ti Mikas, ar re a chome e kêriou Mikas a zeuas war o lerh en eur harmi,
23. Hag i a harme a-dreñv dezo. Ar re-mañ o veza o gwelet, a lavaras da Vikas : Petra a fell dit ? Perag e harmez-te ?
24. Hag eñ a lavaras : Kaset hoh-eus ganeoh va doueed, pere em-eus greet din, ha va beleg, ha kement em-eus, hag e livirit : Petra a hoarvez ganez ?

25. Ha mibien Dan a lavaras dezañ : Diwall na gomzi mui ouzom, gand aon na zeuje tud kounnaret d'en em deurel warnout, ha na vijes kollet ha da oll di ganez.
26. Hag i a heulias o hent. Hogen Mikas o weloud penaoz e oa ar re-mañ kreñvoh egetañ, a zistroas d'e di.
27. Hogen ar c'hweh-kant den a gasas ganto ar beleg, hag ar pez on-eus lavaret kent : hag i a zeuas da Lais etrezeg eur bobl sioul ha leun a fiziañs, hag e lazjont anezou gand ar hleze, hag e lakejont an tan e kêr.
28. Hag an dud-se n'o-doe skoazell ebed, o veza ma choment pell diouh Sidon, ha n'odoa darempred na gwerzidigez ebed gand neb hini : rag ar gêr-ze a oa diazezet e bro Robob ; hag o veza he savet a-nevez, e chomjont enni.
29. Hag i a halvras Dan, euz a ano o zad a oa mab da Izrael, ar gêr-ze e oa kent anvet Lais.
30. Hag i a zavas evito ar skeudenn gizellet, hag a lakaas Jonatan, mab Gersam, mab Moizez, hag e vibien da veleien e breuriez Dan, beteg deiz o sklaverez.
31. Hag idol Mikas a chomas en o hreiz keit ha ma oe ti Doue e Silo. En deiziou-ze ne oa ket a roue e Izrael.

Pennad.

Gwreg eul Levit a zo gwallet gand tud Gabaa.

1. Bez' e oa eul Levit pehini a chome war gostez menez Efraim, hag en-doa kemeret eur wreg euz a Vetlehem Juda.
2. Houmañ a guitaas anezañ, hag o veza distroet da Vetlehem e ti he zad, e chomas e-pad pevar miz en e di.
3. Heh ozah, pehini en-doa c'hoant d'en em unvani a-nevez ganti, d'he likaoui ha d'he degas gantañ, a yeas war he lerh gand eur paotr ha daou azen. E wreg a zegemeras anezañ hag hel lakaas da vond e-barz ti he zad. Pa glevas e dad-kaer kement-se, ha pa her gwelas, ez eas ez-laouen war e arbenn.
4. Hag e pokas dezañ. Hag ar mab-kaer a chomas tri devez e ti e dad-kaer, o tebri hag oh eva gantañ gand kalz a galoniez.
5. Hogen ar pevare deiz o sevel diouh ar mintin, e fellas dezañ mond kuit, hag e dad-kaer a zalhas anezañ hag a lavaras dezañ : Kemer a-raog eun tamm bara, evid rei nerz d'az kalon, ha goude-ze ez i kuit.
6. Hag i a azezas, a zebras hag a evas o-zri. Hag an tad-kaer a lavaras d'e vab-kaer : Chom ganeom hirio, me az ped, hag en em laouenaom kevred.
7. Hogen eñ o sevel a fellas dezañ mond kuit. Hag e dad-kaer hen dalhas ker stard ma hel lakaas da chom en e di.
8. Ha pa oe deuet ar mintin, al Levit a fellas dezañ mond kuit. Hag e dad-kaer a lavaras adarre dezañ : Da bedi a ran, emezañ, da gemeroud eun nebeud boued, ha pa'z-pezo nerzet da galon ha pa vezo kresket an deiz, neuze ez i kuit. Debri a rejont eta kevred.
9. Hag an den yaouank a zavas evid mond kuit gand e wreg hag e baotr. Hag e dad-kaer a lavaras c'hoaz dezañ : Gwel penaoz e kouez an deiz, hag e tosta ar pardaez : chom c'hoaz hirio em zi, hag en em laouena, ha warhoaz en em liki en hent evid distrei d'az ti.
10. Ne fellas ket d'e vab-kaer rei e hrad d'e lavar ; hogen raktal en em lakaas en hent hag e teuas war harz Jebus, a zo anvet ivez Jeruzalem, o kas gantañ e zaou azen karget hag e wreg.

11. Ha pa oant tost dija da Jebus, ha ma teue an noz e-leh an deiz, e lavaras ar paotr d'e vestr : Deus, me az ped, ha distroom etrezeg kêr ar Jebuseed ha chomom enni.
12. Hag e vestr a lavaras dezañ : N'ez in ket e kêr eur bobl a-ziavêz, ha n'eo ket euz a vugale Izrael ; hogen me a dremeno beteg Gabaa :
13. Ha pa vezin erruet eno, e chomim er gêr-ze, pe da vihanna e kêr Rama.
14. Tremenoud a rejont eta e-biou da Jebus, hag e kerzjont bepred ; hag an heol a guzas dirazo pa oant war harz Gabaa, a zo e breuriez Benjamin.
15. Hag i a zistroas evid chom eno. Ha pa oent eet e-barz, eh azejont el leur-gêr ; rag den ne felle dezañ o degemeroud hag o herberhia.
16. Ha setu e teuas eun den koz, pehini a zistroe euz ar park hag euz e labour war ar pardaez, pehini a oa e-unan euz a venez Efraim, hag a chome evel eun diavêziad e Gabaa ; rag tud ar vro-ze a oa bugale Jemini.
17. An den koz o sevel e zaoulagad a welas eun den azezet el leur-gêr gand e bakadou ; hag eñ a lavaras dezañ : A beleh e teuez ? Ha peleh ez ez ?
18. Hag al Levit a lavaras dezañ : Euz a Vetlehem Juda e tuom, hag ez eom d'ar gêr a zo war gostez menez Efraim, a beleh e oam eet da Vetlehem : ha bremañ ez eom da di Doue, ha den ne fell dezañ on degemroud en e di,
19. Petra bennag ma on-eus kolo ha foenn evid an azened, ha bara ha gwin evidon hag evid da blah²⁷⁰ hag evid ar paotr a zo ganen. N'on-eus ezomm a netra nemed euz a herberh.
20. Hag an den koz a lavaras dezañ : Ra vezo ar peoh ganez ; me a roio dit kement ha ma eh eus ezomm ; hogen hepken na chom ket, me az ped, war al leur-gêr.
21. Hag eñ a lakaas al Levit da vond en e di, hag a vouetas an azened ; ha goude ma o-doe gwalhet o zreid, o lakaas da ober banvez.
22. Pa edont o vanbeza hag o nerza o horvou o tebri hag oh eva, goude skuizder an hent, e teuas tud euz ar gêr-ze, mibien Belial (da lavaroud eo, heb reiz²⁷¹), pere o veza kelhiet ti an den koz, a zeuas da skei ouz an nor, o harmi ouz perhenn an ti, en eur lavaroud : Kas er-mêz an den a zo eet en da di, evid ma wallim anezañ.
23. Hag an den koz a yeas er-mêz d'o havoud, hag a lavaras : Na rit ket, va breudeur, na rit ket an droug-se ; rag an den-ze a zo deuet em zi da herberhia ; ehanit eta ar follentez-se.
24. Eur verh werh am-eus, hag an den-ze en-deus e wreg : o has a rin deoh evid ho mezekaad ha gwalha ho kwall-youl : ho pedi a ran hepken na reot ket ar fallagriez-se a-eneb reiz e-keñver eur gwaz.
25. Ne felle ket d'ar re-mañ rei o grad d'e lavar ; ha pa welas al Levit kement-se, e kasas dezo e wreg, hag e lezas anezi d'o gwallerez : hag ar re-mañ, goude beza gwallet anezi a-hed an noz, he lezas da vond pa eo deuet ar mintin.
26. Hogen ar wreg, pa oe diazezet an deñvalijenn, a zeuas ouz dor an ti, e pehini e chome heh ozah, hag e kouezas eno.
27. Pa oe deuet ar mintin, e savas an ozah hag e tigoras an nor evid heulia e hent : ha setu e wreg a oa gourvezet e-tal an nor, hag he daouarn astennet war an treuzou.
28. Hag eñ o kredi penaoz e oa kousket, a lavaras dezi : Sao, ha kerzom. Hogen hi ne lavaras ger ; hag eñ o kredi penaoz e oa maro, he hemeras hag he lakaas war eun azen ; hag eñ a zistroas d'e gêr.
29. Ha pa oe deuet d'e di, e kemeras eur gontell, hag o veza trohet korv maro e wreg gand heh eskern e daouzeg lodenn hag e daouzeg tamm, e kasas anezo da oll harzou Izrael.

²⁷⁰ evid da blah : evid ar plah.

²⁷¹ heb reiz : fallagr.

30. Pa weljont kement-se, e leverjont oll : Biskoaz n'eo bet greet eun dra heñvel en Izrael, abaoe an deiz e pehini eo pignet on tadou euz an Ejipt bete-vremañ : dougit ar varn ha livirit kevred petra a zo da ober en darvoud-se.

Pennad.

Mibien Benjamin a zo trehet.

1. Neuze oll vugale Izrael a yeas er-mêz, hag a zastumas oll evel eun den hepken, adaleg Dan beteg Bersabee ha douar Galaad, etrezeg an Aotrou e Masfa.
2. Hag oll bennou braz ar bobl, hag oll vreuriezu Izrael en em gavas e strollad pobl Doue, da houzoud eo, pevar-hant mil brezeliad war droad.
3. (Ha bugale Benjamin a glevas penaoz bugale Izrael a oa pignet da Vasfa). Goulennet e oe digand al Levit, ozah ar wreg a oa bet lazeta, penaoz e oa bet c'hoarvezet eun torfed ker braz.
4. Hag eñ a lavaras : Eet e oan bet e Gabaa Benjamin gand va gwreg evid en em herberhia eno.
5. Ha setu tud ar gêr-ze a gelhias e-pad an noz an ti ma oan ennañ, o felloud dezo va laza, hag a heskinas va gwreg gand eur froudenn a hadaliez ker braz ma eo marvet-hi.
6. O veza kemeret he horv, em-eus e drohet a-dammou hag em-eus kaset al lodennou anezañ da oll harzou ho pro, o veza n'eo bet greet biskoaz eun torfed ker braz nag eun dismegañs ken argaruz en Izrael.
7. Emaoh amañ oll, bugale Izrael ; grit ar pezh a dleit da ober.
8. Hag an oll bobl a zavas hag a lavaras en eur vouez : Ne zistroim ket d'on teltou, hag hini ahanom n'ez ay d'e di :
9. Hogen setu amañ petra a raim kevred a-eneb Gabaa.
10. Ra vezo dilennet euz a douez oll vreuriezu Izrael deg den war kant, ha kant war mil ha mil war deg mil, evid ma tougint boued d'an arme, ha ma hellim stourmi ouz Gabaa Benjamin ha disteurel warnezi ar pezh a zellez evid an torfed a zo bet greet enni.
11. Oll Izrael eta en em zastumas e-tal ar gêr-ze, evel eun den hepken, gand eun heveleb mennoz, hag eun heveleb dezo.
12. Hag i a gasas kannaded etrezeg oll vreuriezu Benjamin evid lavared dezo : Perag ef-heñ²⁷² bet greet eun droug ker braz en ho touez ?
13. Roit deom ar wazed euz a Habaa, pere o-deus greet an droug mezuz-se, evid ma varvint, ha ma vezo tennet an droug euz a Izrael. Bugale Benjamin ne fellas ket dezo selaoui gourhemenn bugale Izrael, o breudeur :
14. Hogen euz an oll gêriou euz o breuriezu, eo en em zastumjont e Gabaa, evid dougen skoazell da re ar gêr-ze, hag evid stourmi ouz oll bobl Izrael.
15. Ha kavet e oe e breuriezu Benjamin pemp mil den warn-ugent a denne ar hleze, heb niveri tud Gabaa,
16. Pere a oa seiz-kant den euz ar re galoneka, a stourme gand an dorn kleiz kerkoulz ha gand an dorn dehou, hag a daole mein gand ar vatalm ken eeun, m'o-divije paket eur vlevenn, heb ma vije distroet an taol mên a du ebed.
17. En em gavoud a reas ivez e-touez bugale Izrael, heb niveri bugale Benjamin, pevar-hant mil den a denne ar hleze ha dare da stourmi.

²⁷² ef-heñ : eo.

18. Ar re-mañ a zavas hag a zeuas da di Doue, da lavaroud eo, da Zilo : hag i a houlennas kuzul digand Doue, hag a lavaras dezañ : Piou a vezo e penn on arme a-eneb bugale Benjamin ? Hag an Aotrou a lavaras : Ra vezo Juda e penn ganeoh.
19. Ha raktal bugale Izrael o sevel dioh ar mintin, a stegnas o hamp ouz Gabaa.
20. Hag o vond ahano da vrezekaad ouz bugale Benjamin, e teujont da stourmi ouz kêr Gabaa.
21. Hogen bugale Benjamin o veza deuet er-mêz euz a Habaa, a lazas en deiz-se daou vil den warn-ugent euz a vugale Izrael.
22. Bugale Izrael o fizioud war o nerz ha war o niver, a gasas adarre o arme en heveleb leh e pehini o-doa stourmet kent :
23. En heveleb doare koulskoude ma pignjont a-raog, ha ma weljont dirag an Aotrou beteg an noz : hag i a houlennas kuzul digantañ, o lavaroud : Ha me a dle c'hoaz mond da stourmi ouz bugale Benjamin va breudeur, pe nann ? Hag an Aotrou a lavaras dezo : Pignit etrezeg enno, ha stourmit outo.
24. Ha pa dostaas antronoz bugale Izrael evid stourmi ouz bugale Benjamin,
25. Bugale Benjamin a zilamas er-mêz euz a berzier Gabaa, hag o tiarbenna bugale Izrael, e rejont anezo eul lazerez ker braz, ma chomas war al leh triweh mil den a vrezel.
26. Rag-se oll vugale Izrael a zeuas da di Doue, hag o veza azezet e ouelent dirag an Aotrou : hag i a yunas en deiz-se beteg ar pardaez hag a ginnigas d'an Aotrou sakrifisou-losk hag ostivou a beoh,
27. Hag a houlennas kuzul digantañ diwar-benn o doare. En amzer-ze arh kevredigez an Aotrou a oa eno,
28. Ha Finees, mab Eleazar, mab Aaron, a oa ar henta e ti Doue. Kuzul a houlennjont eta digand an Aotrou, o lavaroud : Ha ni a dle c'hoaz stourmi ouz bugale Benjamin or breudeur, pe mar dleom paoueza ? Hag an Aotrou a lavaras dezo : Pignit, rag warhoaz o likiin etre ho taouarn.
29. Ha bugale Izrael a lakaas spiou war-dro da gêr Gabaa ;
30. Hag i a yeas an drede gwech gand o arme a-eneb bugale Benjamin, evel m'o-doa greet ar genta hag an eil gwech.
31. Bugale Benjamin a zilamas ivez euz o hêr gand herrder, hag a yeas pell war-lerh o enebourien a dehe, en heveleb doare ma hloazjont lod anezo evel an deiz kenta hag an eil, hag e tispennjont ar re a droe o hein dre zaou hent, dre an hini a ya da Vetel, ha dre an hini a ya da Habaa, hag e lazjont war-dro tregont den :
32. Rag i a venne e trehfent anezo evel m'o-doa greet a-ziaraog. Hogen bugale Izrael a ree neuz da dehoud, gand ar meno o-doa da denna anezo euz o hêr, ha d'o degas en heñchou a bere on-eus komzet kent.
33. Oll vugale Izrael eta a zavas euz al leh e pehini edont, hag a reizas o arme el leh anvet Baaltamar. Hag ar spieren a oe lakaet war-dro kêr, a zeuas ivez d'en em ziskoueza,
34. Ha da gerzoud euz a du ar huz-heol euz a gêr. Hogen deg mil den all euz a vugale Izrael a halve tud kêr d'an emgann. Hag ar brezel a waske war bugale Benjamin ; ha ne weljont ket penaoz ar maro a hourdrouze anezo a bep tu.
35. Hag an Aotrou a skoas warnezo dirag bugale Izrael, pere a lazas euz anezo en deiz-se pemp mil warn-ugent ha kant den, oll tud-a-vrezel hag a denne ar hleze.
36. Hogen bugale Benjamin, pa weljont ne oant ket kreñv a-walh, en em lakaas da dehoud. Ha bugale Izrael o weloud kement-se, a roas dezo an dro da dehoud, evid ma kouezjont er spiou a oa bet aozet dezo e-harz kêr.
37. Ar re-mañ o sevel raktal euz al leh e pehini e oant kuzet, a drehas bugale Benjamin a dehe en o raog, a yeas e-barz kêr, hag a lazas gand ar hleze an oll dud a oa enni.

38. Hogen bugale Izrael o-doa roet da arouez d'ar re o-doa lakaet e spi, penaoz goude ma o-divije kemeret kêr, e rajent eun tan braz, evid, pa zeuje ar moged da zevel, ma tiskouezjont penaoz e oa kemeret kêr.
39. Bugale Izrael, e-kreiz an emgann, pa weljont kement-se, (rag bugale Benjamin a venne penaoz e tehent, hag a yee war o lerh, goude beza lazet tregont den euz o arme) :
40. Ha pa weljont evel eur peul moged a zave euz a gêr, bugale Benjamin o selloud ivez war o lerh, a welas penaoz e oa kemeret kêr, ha penaoz e save ar flammou etrezeg an neñv.
41. Neuze ar re o-doa greet neuz da dehoud, a enebas o tistrei a-grenn outo. Ha bugale Benjamin o weloud kement-se, en em lakaas da dehoud ;
42. Ha da vond war hent an distro ; hogen o enebourien a yeas war o lerh : hag ar re o-doa entanet kêr, a yeas war o arbenn.
43. C'hoarvezoud a reas eta penaoz e oent trehet a bep tu gand o enebourien, ha ne oe ehan ebed d'al lazerez. Koueza a rejont maro war-zu sav-heol Gabaa.
44. Hogen el leh-se e oe lazet triweh mil den, oll tud a vrezel ha kaloneg-braz.
45. Ar re all euz a vugale Benjamin, o weloud kement-se, a dehas etrezeg an distro, hag a yeas war-zu ar roh anvet Remmon. Hogen o veza ma oant skignet tu-mañ ha tu-hont en teh-se, e oe lazet c'hoaz pemp mil anezo. Ha pa'z eent pelloh, bugale Izrael a yeas war o lerh hag a lazas c'hoaz daou vil anezo.
46. Hag evel-se e c'hoarvezas penaoz ar re oll euz a vugale Benjamin pere a oe lazet e meur a leh, a oe euz a bemp mil den warn-ugent, tud a vrezel ha kaloneg-braz.
47. Ne chomas eta euz a oll vreudeur Benjamin, euz ar re a hellas mond kuit ha tehoud d'an distro, nemed c'hweh-kant den, pere a chomas war roh Remmon e-pad pevar miz.
48. Hogen bugale Izrael o veza distroet euz ar brezel, a lazas gand ar hleze kement a oa chomet e kêr, adaleg an dud beteg al loened ; hag oll gêriou hag oll vourhiou Benjamin a oe devet gand an tan.

Pennad.

Dispennadur tud Jabez-Galaad. Skraperez merhed Silo.

1. Bugale Izrael a douas ivez e Masfa, hag a lavaras : Hini ahanom ne roy e verh da wreg da vibien Benjamin.
2. Hag i a zeuas oll da di Doue e Silo, hag o veza chomet dirazañ beteg ar pardaez, e savjont o mouez, ha gand eur yuderez braz, en em lakejont da ouela o lavaroud :
3. Perag, Aotrou, Doue Izrael, ef-heñ c'hoarvezet an droug-se d'az pobl, ma eo lamet hirio eur vreuriezh euz or hreiz ?
4. Antronoz o veza savet diou ar mintin, e savjont eun aoter ; hag e kinnigjont eno sakrifisou-losk, ha viktimou a beoh, hag e leverjont :
5. Piou eta euz a oll vreuriezhou Izrael n'eo ket pignet gand arme an Aotrou ? Rag i a oa en em ouestlet gand eul le braz, pa oant e Masfa, da laza ar re na zeujont ket.
6. Ha bugale Izrael o kaoud keuz euz ar pezh a oa c'hoarvezet gand o breudeur euz a vreuriezh Benjamin, en em lakaas da lavaroud : Eur vreuriezh a zo bet lamet euz a Izrael ;
7. A beleh e kemerint-i gwraez ? Rag ni on-eus touet oll penaoz ne rojem ket dezo or merhed.

8. Rag-se e leverjont : Piou euz a oll vreuriezhou Izrael n'eo ket pignet etrezeg an Aotrou da Vasfa ? Ha setu e oe kavet penaoz ne oa ket bet tud Jakez-Galaad en arme-ze.
9. (En amzer-ze, evid gwir, pa edo bugale Izrael e Silo, n'en em gavas eno hini anezo).
10. Kas a rejont eta deg mil den kaloneg-braz, hag e hourhemennjont dezo : It, ha skoit gand ar hleze oll dud Jabez-Galaad, ken ar gwraez, ken ar vugale.
11. Hag an dra-mañ a dleot da viroud : Lazit kement paotr ha kement maouez he-devezo anavezet gwaz ; hogen mirit ar gwerhez.
12. Ha kavet e oe e Jabez-Galaad pevar-hant gwerhez, pere ne oant ket bet e gwele gwaz ebed ; hag i a gasas anezo d'ar hamp e Silo, e bro Kanaan.
13. Hag i a gasas kannaded da vugale Benjamin, pere a oa war roh Remmon, evid lavaroud dezo penaoz e tegemerjent anezo e peoh.
14. Neuze e tistroas bugale Benjamin, hag e oe roet dezo da wragez merhed euz a Jabez-Galaad : hogen ne oe ket kavet re all da rei dezo en heveleb doare.
15. Hag Izrael oll a oe glaharet-braz, hag en-doe keuz ez oa kollet unan euz a vreuriezh Izrael.
16. Hag henaoured ar bobl a lavaras : Petra a raim-ni d'ar re all, pere n'o-deus ket bet a wragez ? Rag oll verhed breuriezh Benjamin a zo bet laz.
17. Ha ni a dle lakaad on oll breder, hag on oll boan, evid na vezo ket kollet unan euz a vreuriezhou Izrael.
18. Koulskoude ne hellom ket rei dezo or merhed, o veza ma om dalhet gand ol le hag ar wall bedenn on-eus greet, pa on-eus lavaret : Milliget ra vezo an hini a roy unan euz e verhed da wreg da vibien Benjamin.
19. Eun dezo a gemerjont hag e leverjont : Setu lid an Aotrou a virer beb bloaz e Silo, pehini a zo diazezet war-zu an hanternoz euz a gêr Vetel, ha war-zu ar sav-heol euz an hent a ya euz a Vetel da Zichem, ha war-zu ar hreisteiz euz a gêr Lebona.
20. Hag i a hourhemennas da vibien Benjamin, o lavaroud : it, ha kuzit er gwiniennou.
21. Ha pa welot merhed Silo o tond da zañsa²⁷³ hervez ar hiz, dilammit raktal euz ar gwiniennou, ha krapit pep hini unan anezo da wreg, ha distroit da vro Benjamin.
22. Ha pa zeuy o zadou hag o breudeur d'en em glemma ahanoh ha da hourdrouza, e livirim dezo : Ho-pezet truez outo, rag n'o-deus ket o hrapet dre wir ar vrezilidi hag an dreherien ; hogen pa o-deus o goulennet diganeoh, n'hoh-eus ket o roet, hag oh kirieg a ze.
23. Ha bugale Benjamin a reas ar pezh a oa bet gourhemennet dezo : ha diou an niver ma oant, pep hini anezo a grasas unan euz ar merhed a zañse, evid beza da wreg dezañ : hag o veza distroet d'o bro, e savjont kêriou hag e chomjont enno.
24. Bugale Izrael a zistroas ivez d'o zeltou, pep hini en e vreuriezh hag en e diad. En amzer-ze ne oa ket a roue en Izrael, hogen pep hini a ree evel ma kave ez oa mad da ober.

²⁷³ da zañsa : da zañsal.

Levr Ruth.

Pennad.

Elimelek a ya gand e dud da vro Moab. Noemi gand he merh-kaer a zistro da Vetlehem.

1. En amzer eur barner, pa hourhemenne ar varnerien, e c'hoarvezas naonegez er vro. Eun den a guitaas Betlehem Juda, evid mond e bro ar Voabited gand e wreg hag e zaou vab.
2. Elimelek a reed euz a hemañ, ha Noemi euz a e wreg : e zaou vab a oa anvet, unan anezo Mahalon, hag egile Chelion. Ginidig e oant euz a Efrata e Betlehem Juda. Eet e bro ar Voabited, e chomjont eno.
3. Elimelek, pried Noemi, a varvas, hag hi a chomas gand he mibien.
4. Ar re-mañ a gemeras evid gwrazez merhed Moabitezad, unan anvet Orfa, hag eben Ruth. Chom a rejont eno deg vloaz.
5. O-daou e varvjont, da lavaroud eo, Mahalon ha Chelion : ha Noemi en em gavas e diouer euz he daou vab hag euz he fried.
6. Sevel a reas evid kuitaad bro ar Voabited, ha distrei d'he hini, gand he diou verh-kaer ; rag klevet he-doa penaoz en-doa an Aotrou sellet a druez ouz e bobl, ha roet boued dezo.
7. Kuitaad a reas eta leh heh ergerz, gand he diou verh-kaer : hag o veza e penn an hent evid distrei da zouar Juda,
8. E lavaras dezo : It da di ho mamm : ra ray an Aotrou trugarez en ho keñver, evel ma hoh-eus greet e-keñver ar re a zo maro hag em heñver-me.
9. Ra ray deoh kaoud an ehan e ti ar priejou a zegouezo ganeoh. Hag hi a bokas dezo. Ar re-mañ en eur zevel o mouez en em lakaas da ouela,
10. Ha da lavaroud : Mond a raim ganez etrezeg da bobl.
11. Ha Noemi a lavaras dezo : Distroit, va merhed, perag e teuit-hu ganen ? Ha bez' em-eus-me c'hoaz mibien em hov, evid ma hellfeh gedal priejou diganen ?
12. Distroit, va merhed, hag it kuit : rag a-vremañ on koazet gand ar gozni, ha n'on ket mad evid ar briedelez : ha pa hellfen zoken beza brazet ha gwilioudi euz a vibien en noz-mañ,
13. Mar c'hoantait gedal beteg ma teuint braz hag en oad da zimezi, kentoh e viot deuet koz, eged na viot dimezet. Na rit ket an dra-ze, va merhed, me ho ped ; rag ho klahar a wash re war va halon, ha dorn an Aotrou a zo savet warnon.
14. En em lakaad a rejont a-nevez da zevel o mouez ha da ouela : Orfa a bokas d'he mamm-gaer hag a yeas kuit : Ruth a chomas gand he mamm-gaer.
15. Ha Noemi a lavaras dezi : Setu da hoar a zo distroet da gavoud he broiz hag he doueed ; kee ganti.
16. Ha Ruth a lavaras dezi : Na zav ket em eneb evid va lakaad da vond diouzit ha d'az kuitaad : rag e peleh bennag ma'z i, ez in ivez, hag el leh ma chomi, e chomin ivez. Da bobl a vezo va fobl, ha da Zoue a vezo va Doue.
17. An douar az tegemero goude da varo, am gwelo o vervel, hag ennañ e vezin beziet. Ra ray an Aotrou kement-se din hag ouspenn, mar gell netra all nemed ar maro va has kuit diouzit.
18. Noemi eta o weloud penaoz he-doa Ruth lakaet en he fenn mond d'he heul, ne zalhas ken outi, ha n'heh alias ken da zistrei etrezeg he zud.

19. Hag o veza en em lakaet en hent o-diou, ez ejont da Vetlehem ha ma en em gavjont e kêr, an oll a gomzas anezo : hag ar merhed a lavare : Hounnez eo Nomei.
20. Hag hi a lavaras dezo : N'am anvit ket Noemi (da lavaroud eo, kaer), hogen va anvit Mara (da lavaroud eo, c'hwero), rag an Ollhalloudeg en-deus va harget a hwervder.
21. Leun on eet kuit²⁷⁴, ha goullo en-deus va degaset an Aotrou. pareg eta am anvit-hu Noemi, me pehini en-deus an Aotrou Ollhalloudeg mezekaet ha glaharet ?
22. Dond a reas eta Noemi gand Ruth, ar Voabitez, he merh-kaer, euz a vro heh ergerz ; hag e tistroas da Vetlehem er pred ma edod o vedi an heiz kenta.

Pennad.

Ruth a ya da bennaoui e park Booz. Madelez Booz en he heñver.

1. Elimelek, pried Noemi, a oa kar da eun den galloudeg ha pinvidig-braz, anvet Booz.
2. Ha Ruth, ar Voabitez, a lavaras d'he mamm-gaer : mar gourhemenez din, ez in d'ar park hag e tastumin an tamouezennou a chomo war-lerh ar vederien, e kement leh ma kavin degemer mad digand ar penntiegez. Ha Noemi a lavaras dezi : kee, va merh.
3. Mond a reas eta, hag e pennaoue war-lerh ar vederien. C'hoarvezoud a reas penaoz ar park-se an-doa da aotrou unan euz a gerent Elimelek, anvet Booz.
4. Ha setu hemañ a zeue euz a Vetlehem hag a lavaras d'ar vederien : an Aotrou a vezo ganeoh. Hag hi a lavaras dezañ : Ra vezi benniget gand an Aotrou.
5. Ha Booz a lavaras d'ar paotr yaouank a oa e penn ar vederien : Da biou eo ar plah yaouank-se ?
6. Hag eñ a lavaras : Eur Voabitez eo hag a zo deuet gand Noemi euz a vro ar Voabited.
7. Goulennet he-deus heulia ar vederien ha dastumi an tamouezennou a chomo war o dilerh : hag abaoe goulou-deiz bete-vremañ ema er park, heb beza distroet d'ar gêr pennad ebed.
8. Ha Booz a lavaras da Ruth : Ne da ket en eur park all da bennaoui, na ne da ket kuit ahann : hogen en em laka kevred gand va merhed,
9. Hag heul ar vederien. Rag gourhemennet em-eus d'am faotred ne raje hini droug dit : ha ma eh-eus sehed, kee da gaoud ar podou, hag ev euz an dour a ev va faotred.
10. Ruth oh en em deurel war he genou hag o pedi war he daoulin, a lavaras dezañ : A betra e teu kement-se din, ma kavan degemer mad diganez, hag e teuez d'am anaoud, ha me maouez divroet ?
11. Ha Booz a lavaras dezi : Klevet am-eus kement eh-eus greet e-keñver da vamm-gaer goude maro da bried ; ha penaoz eh-eus kuiteet da gerent hag an douar e pehini out ganet, hag out deuet e-touez tud ha na anavezes ket kent.
12. Ra zistaolo an Aotrou warnout ar mad eh-eus greet, ha ra roy an Aotrou, Doue Izrael, eur gopr ar brasa dit, pa out deuet d'e gavoud, ha d'en em deurel dindan e ziuaskell.
13. Hag hi a lavaras : Degemer mad em-eus kavet dirag da zaoulagad, va aotrou ; va dihlaharet eh-eus, ha komzet eh-eus ouz kalon da vatez, petra bennag n'on ket heñvel ouz unan euz da blahed.

²⁷⁴ Leun on eet kuit : eet on kuit gand eur bern traou.

14. Ha Booz a lavaras dezi : Pa vezo pred debri, deus amañ ha debr bara, ha soub da damm er gwinegr. Azeza a reas eta e-kichenn ar vederien : kemeroud a reas youd eviti, debri a reas he gwalh hag e tastumas an tammou a chome a-zilerh.
15. Neuze e savas ahano da zastumi a-nevez pennou ed. Hogen Booz a hourhemennas d'e baotred, o lavaroud : Ha pa hoantafe-hi medi ganeoh, na virit ket outi :
16. Taolit zoken a-zevri lod euz ho malanou, ha stlapit o war ho lerh, evid m' o dastumo heb kaoud mez hag heb beza tamallet gand den.
17. Penanoui a reas eta er park beteg ar pardaez ; hag o veza dornet gand eur walenn ar pennou ed he-doa dastumet, e kavas a heiz war-dro ar vent euz a eun efi, da lavaroud eo, tri astellad.
18. O hemeroud a reas hag e tistroas e kêr, hag o diskouezas d'he mamm-gaer : kinniga a reas ivez hag e roas dezi ar pez a oa chomet euz he boued goude ma he-doa debret he gwalh.
19. Hag he mamm-gaer a lavaras dezi : E peleh eh-eus-te pennaouet hirio, hag e peleh eh-eus-te labouret ? Ra vezo benniget an hini en-deus bet truez ouzit. Ha Ruth a roas da anaoud dezi e ti piou he-doa labouret, hag e lavaras penaoz an den-ze a oa anvet Booz.
20. Ha Noemi a lavaras dezi : Ra vezo benniget gand an Aotrou ; rag miret en-deus an heveleb trugarez e-keñver ar re varo, evel m'en-doa bet e-keñver ar re veo. Hag hi a lavaras c'hoaz : An den-ze a zo kar deom.
21. Kemennet en-deus c'hoaz din, eme Ruth, da zond da gaoud ar vederien, ken na vezo medet e oll ed.
22. Hag he mamm-gaer a lavaras dezi : Gwell eo dit, va merh, mond da vedi gand e blahed, gand aon na raje unan bennag droug dit en eur park all.
23. Dond a reas eta gand plahed Booz ; hag ez eas da vedi ganto, ken na oe dastumet an heiz hag ar gwiniz er solierou.

Pennad.

Ruth a ya da gouska ouz treid Booz.

1. Pa oe distroet Ruth da gaoud he mamm-gaer, Noemi a lavaras dezi : Klask a rin ma vezi e peoh hag az lakaad a rin da veza ervad.
2. Ar Booz-se, gand plahed pehini out bet er park, a zo kar-nes deom, hag en noz-mañ e wento e heiz el leur.
3. En em walh eta, en em lard gand louzou c'hwez-vad, gwask da gaerra dillad, ha diskenn d'al leur. Ne 'n em ziskouez ket da Vooz, ken n'en-devezo debret hag evet.
4. Ha pa'z ay da gouska, evesa e pe leh e kousko : mond a ri di hag e tizoloi ar ballen war-zu an treid ; en em deurel a ri eno hag e chomi. Neuze eñ e-unan a lavaro dit petra a dlei da ober.
5. Ha Ruth a lavaras dezi : Ober a rin kement a hourhemenni din.
6. Hag hi a ziskennas d'al leur, hag a reas kement he-doa he mamm-gaer gourhemennet dezi.
7. Ha pa en-doe Booz debret hag evet, ha pa en em gavas laouennoh, ez eas da gouska e-harz eur bern malanou : ha Ruth a zeuas didrouz, ha goude beza dizoloet ar ballenn war-zu an treid, en em daolas eno.
8. Ha setu war-dro hanternoz e oe spontet ha nehet Booz, pa welas eur vaouez gourvezet e-harz e dreid.

9. Hag eñ a lavaras dezi : Piou out-te ? Hag hi a lavaras : Me eo Ruth da vatez. Astenn da ballenn war da vatez, o veza ma'z out kar-nes dezi.
10. Va merh, emezañ, benniget out gand an Aotrou, hag an diweza trugarez-mañ a zo dreist ar genta ; o veza n'eh-eus ket heuliet paotred yaouank, na re baour, na re binvidig.
11. N'az-pet ket aon eta ; ober a rin kement eh-eus lavaret din ; rag an oll a oar em hêr penaoz out eur vaouez fur.
12. Ne nahan ket e ven kar-nes dit ; hogen eun all a zo c'hoaz nesoh.
13. Diskuiz e-pad an noz : ha pa vezo deuet ar mintin, mar fell dezañ da zerhel dre ar gwir a gerentiez, gwell a ze : ha ma ne fell ket dezañ, me az kemero heb arvar ebed : beo eo an Aotrou : kousk beteg ar mintin.
14. Hag hi eta a gouskas e-harz e dreid a-hed an noz. Sevel a reas a-barz ma helle an dud en em anaoud an eil egile : ha Booz a lavaras dezi : Diwall na oufe den e ves deuet amañ.
15. Ha c'hoaz e lavaras : Astenn ar ballenn a zo warnout, ha dalh hi gand da zaou zorn. Hag hi o veza heh astennet hag he dalhet, Booz a wentas c'hweh boezellad hei hag o lakaas warnezi : hag houmañ a yeas da gêr gand he beh.
16. Hag ez eas da gaoud he mamm-gaer, pehini a lavaras dezi : Petra eh-eus-te greet, va merh ? Ha Ruth a lavaras dezi kement en-doa greet Booz en he heñver.
17. Hag hi a lavaras : Setu c'hweh boezellad heiz en-deus roet din, o lavaroud : Ne fell ket din e tistrofes goullo etrezeg da vamm-gaer.
18. Ha Noemi a lavaras dezi : Gortoz, va merh, ken na welim ar penn euz an dra-mañ ; rag an den-ze ne baouezo ket ken n'en-devezo kaset da benn kement en-deus lavaret.

Pennad.

Booz a gemer Ruth da wreg.

1. Booz a bignas eta da borz-kêr hag a azezas eno. Ha pa welas o vond e-biou an den-ze, kar da Ruth, euz a behini on-eus komzet en a-raog, e lavaras dezañ, oh e hervel dre e ano : Distro eun nebeud hag azez amañ. Hag eñ a zistroas hag a azezas.
2. Ha Booz o kemeroud deg den euz a henaoured kêr, a lavaras dezo : Azezit amañ.
3. Pa oe azezet ar re-mañ, e komzas evel-henn ouz e gar : Noemi, pehini a zo distroet euz a vro ar Voabited, a werzo lod euz a bark Elimelek or breur :
4. Falvezet eo bet din e klevjes kement-se, ha c'hoant am-eus bet e lavaroud dit dirag ar re oll a zo azezet amañ, hag a zo henaoured va fobl. Mar fell dit kaoud ar park-se dre ar gwir a gerentiez, pren eñ, ha dalh eñ. Hogen ma ne fell ket dit, lavar eñ din, evid ma ouezin petra a dlean da ober : rag n'eus kar all ebed nemedout, pehini eo an nesa, ha me, pehini eo an eil. Hag eñ a lavaras : me a breno ar park.
5. Ha Booz a lavaras dezañ : Pa'z-pezo prenet ar park euz a zorn Noemi, e rankout ivez kemeroud Ruth, ar Voabitez, pehini a zo bet gwreg an hini maro, evid ma tegasi a-nevez ano da gar en e zegouez.
6. Hag hemañ a lavaras : Ar gwir a gerentiez a zilezan ; rag ne dlean ket moug nested va herentiez. Kemer va gwir, te, ar gwir a zilezan a galon vad.
7. Hogen eur hiz koz e oa en Izrael e-touez ar gerent, penaoz ma tileze unan bennag e wir da eun all, evid ma vije stard an dilez, e tenne an den e votez evid he rei d'e gar : hounnez e oa an testeni euz an dilez en Izrael.
8. Booz a lavaras eta d'e gar : Tenn da votez. Hag eñ he zennas raktal euz e droad.

9. Ha Booz o komza ouz an henaoured hag ouz an oll : Testou oh, emezañ, hirio, penaoz kement a zo bet da Elimelek, ha da Helion, ha da Vahalon, a zo din, pa emeus e brenet digand Noemi.
10. Ha penaoz e kemeran da wreg Ruth, ar Voabitez, gwreg Mahalon, evid ma tegasin a-nevez ano an hini a zo maro en e zegouez, gand aon na ve kollet e ano en e diegez, e-touez e vreudeur hag e bobl. C’hwi, emeve, a zo testou euz a gement-mañ.
11. An oll bobl a oa ouz porz-kêr, hag an henaoured a lavaras : Ni a zo testou. Ra lakay an Aotrou ar wreg-mañ, pehini a ya en e di, heñvel ouz Rachel ha Lia, pere o-deus savet ti Izrael, evid ma vezo eur skwer a furnez en Efrata, ha ma he-devezo eun ano kaer e Betlehem.
12. Ra zeuio ivez da di, evel ti Farez, pehini a hanas Tamar da Juda, gand ar ouenn a roy an Aotrou dit diouz ar plah yaouank-mañ.
13. Booz a gemeras eta Ruth hag a zimezas ganti : mond a reas d’he havoud, hag an Aotrou he lakaas da engehenta ha da henel eur mab.
14. Hag ar gwragez a lavaras da Noemi : Benniget ra vezo an Aotrou, pehini n’eo ket fellet dezañ e ve da diegez heb nested, nag e ve kollet e ano en Izrael :
15. Evid ma’z-pezo eur mab da zihlahari da galon, ha da vaga da gozni ; rag ganet eo gand da verh-kaer, pehini az kar ; ha kalz gwelloh eo dit eged ma’z-pe seiz mab.
16. Ha Noemi o veza kemeret ar bugel, hel lakaas war he barlenn ; ha ne oa nemeti oh e vaga hag oh e zougen.
17. Ar gwragez heh amezegezed en em laouennee ganti, o lavaroud : Eur mab a zo ganet da Noemi : hag hi a halvas anezañ Obed : hennez a oe tad Isai, tad David.
18. Setu amañ nested Farez : Farez a oa tad Esron ;
19. Esron a oe tad Aram ; Aram a oe tad Aminadab ;
20. Aminadab a oe tad Nabason ;
21. Nabason a oe tad Salmon ;
22. Salmon a oe tad Booz ; Booz a oe tad Obed ;
23. Obed a oe tad Isai ; Isai a oe tad David.

LEVR KENTA SAMUEL

a halvom

LEVR KENTA AR ROUEED

I. Pennad

Anna a houlenñ eur mab digand Doue. Ganedigez Samuel.

1. Bez' e oa eun den euz a Ramataim-Sofim, war menez Efraim, anvet Elkana, mab Jeroham, mab Eliu, mab Tohu, mab Suf, Efratead :
2. Diou wreg en-doa, unan anvet Anna, hag eben Fenenna. Bugale he-doa Fenenna, hag Anna n'he-doa ket a vugale.
3. An den-ze a bigne euz e gêr d'an deiziou merket, evid azeuli Aotrou an armeou, hag evid kinniga sakrifisou dezañ e Silo. An daou vab Heli, Ofni, ha Fineez a oa eno beleien an Aotrou.
4. Eun deiz eta e kinnigas Elkanna eur sakrifis, hag e roas lodennou anezañ da Fenenna e wreg ha d'e oll vibien ha merhed :
5. Hogen ne roas nemed eul lodenn da Anna, hag eñ trist, o veza ma kare anezi. Hogen an Aotrou en-doa serret he hov dezi.
6. Fenenna, he hevezerez, a hlahare ivez anezi hag heh enkreze stard, beteg rebecha dezi penaoz en-doa an Aotrou serret he hov dezi.
7. Evel-se e ree beb bloaz, pa oa deuet an amzer da bigna da dempl an Aotrou ; hag evel-se e heskine anezi. Hogen Anna a ouele ha ne gemere ket a voued.
8. Neuze Elkana, heh ozah, a lavaras dezi : Anna, perag e ouelez-te ? Ha perag ne zebrez-te ket ? Ha perag ef-hi²⁷⁵ glaharet da galon ? Ha n'on ket gwelloc'h dit eged deg mab ?
9. Hogen Anna a zavas goude beza debret hag evet e Silo ; hag Heli, ar Beleg-braz, o veza azezet war e gador dirag rempl an Aotrou ;
10. Hag Anna pehini a oa leun he halon a hwervder, a bedas an Aotrou, en eur ouela doureg ;
11. Hag hi a reas eur gouestl, o lavaroud : Aotrou an armeou, mar sellez ouz glahar da vatez, ha ma eh-eus soñj ahanon, ha ma ne ankounac'haez ket da vatez, ha ma roez d'az sklavez eur paotr, e roin anezañ d'an Aotrou oll zeiziou e vuhez, hag an aotenn n'ez ay ket war e benn.
12. Hogen o veza ma pede-hi kaer dirag an Aotrou, e c'hoarvezas penaoz Heli a evesae ouz he genou.
13. Hogen Anna a gomze en he halon, hag he muzellou hepken a fiñve, heb ma klevet ger ebed. Heli a vennas eta penaoz e oa mezo hi ;
14. Hag e lavaras dezi : Beteg pegeid e vezi-te mezo ? Kee da leuskel eun nebeud ar gwin a zo ennout.

²⁷⁵ ef-hi : eo hi.

15. Hag Anna a lavaras dezañ : A neb hent²⁷⁶, va Aotrou : rag eur wreg reuzeudig-braz on, ha n'em-eus evet na gwin na netra a gement a helffe mezvi ; hogen skuillet em-eus va ene dirag an Aotrou.

16. Na gred ket e ve da vatez evel unan euz a verhed Belial : rag gand an direizded euz va doan hag euz va glahar eo em-eus komzet beteg-henn.

17. Neuze Heli a lavaras dezi : Kee e peoh : ha ra roy dit Doue Izrael ar pez eh-eus goulennet digantañ.

18. Hag hi a lavaras : A-youl e kavje da vatez trugarez dirag da zaoulagad. Hag ar wreg a yeas en he hent ; debri a reas, ha ne oe mui gweñvet he dremm evel kent.

19. Sevel a rejont dioh ar mintin hag eh azeuljont an Aotrou ; distrei a rejont hag e teujont d'o zi e Ramata. Hogen Elkana a yeas da gaoud e wreg, hag an Aotrou en-doe soñj anezi.

20. A-benn eun nebeud amzer goude, Anna a engehentas hag a hanas eur mab, a halv as Samuel, o veza ma he-doa e houlennet digand an Aotrou.

21. Hogen Elkana heh ozah a bignas gand e oll dud evid kinniga d'an Aotrou an ostiv a lid hag e ouestl ;

22. Hag Anna n'ez eas ket, rag hi a lavaras d'heh ozah : N'ez in ket ken na vezo dizonet ar bugel, ha ne zoug in anezañ, evid e ginniga dirag an Aotrou, ha ma chomo eno bepred.

23. Hag Elkana heh ozah a lavaras dezi : Gra evel ma kavi mad, ha chom beteg m'az-pezo e zizonet ; ha me a bed an Aotrou ma seveno e her. Chom a reas eta ar wreg, hag e vagas he mab, beteg ma ve dizonet ganti.

24. Ha pa he-doe e zizonet, e kasas anezañ ganti, gand tri leue, tri boezellad bleud hag eul lestrad gwin ; hag e kasas he mab da di an Aotrou e Silo. Hogen ar bugel a oa c'hoaz bihanig.

25. Hag hi a lazas eul leue, hag a zegasas ar bugel da Heli.

26. Hag Anna a lavaras : Me az ped, va aotrou, da gredi penaoz, evel mar deo beo da ene, ez on ar vaouez-se eh-eus gwelet amañ o pedi an Aotrou.

27. Evid ar bugel-mañ e peden anezañ, hag an Aotrou en-deus roet din ar pez a houlennen.

28. Rag-se em-eus e ouestlet d'an Aotrou keit ha ma vezo beo. Hag hi a azeulas eno an Aotrou. Hag Anna a bedas, hag a lavaras :

II. Pennad.

Kanaouenn Anna. Direizted mibien Heli.

1. En em laouennaet eo va halon en Aotrou, ha va galloud a zo savet em Doue : digoret eo va genou war va enebourien, o veza ma on en em laouennaet en da zilvidigez.

2. N'eus ket a zant evel an Aotrou, rag n'eus hini nemedout, ha n'eo hini kreñv evel on Doue.

3. Na greskit ket ho komziou dichek, oh en em fougea : na zeuet ket al lavariou koz euz ho kenou : rag Doue ar ouiziegezh eo an Aotrou, hag eñ a enklask piz ar mennoziou.

4. Gwareg ar re greñv a zo bet torret, hag ar re wan a zo bet gourizet a nerz.

²⁷⁶ A neb hent : tamm ebed.

5. Ar re a oa leun a-raog, a zo en em lakaet e gopr evid kaoud bara : hag ar re o-doa naon o-deus bet o gwalh ; ken n'he-deus bet an hini vrehagn kalz a vugale, ha n'eo deuet da veza gwan an hini he-doa kalz a vugale.
6. An Aotrou eo a lam hag a ro ar vuhez, a gas d'an ivernou hag a denn anezo.
7. An Aotrou eo a ra ar paour hag ar pinvidig ; eñ eo a izella hag a uhella.
8. Lakaad a ra da zevel an ezommeg euz ar poultr, hag e tenn ar paour euz an teil, evid e lakaad da azeza gand ar briñsed, ha rei dezañ eun tron a hloar : rag ahelou an douar a zo d'an Aotrou, hag eñ eo en-deus lakaet ar bed warnezo.
9. Treid e zent a ziwallo, hag ar re fallagr a davo en deñvalijenn ; rag ne greñvay ket an den gand e nerz e-unan.
10. Enebourien an Aotrou a skrijo dirazañ. Hag eñ a lakay ar gurun da straka warnezo euz an neñv : an Aotrou a varno pennou braz an douar ; ar veli a roy d'e roue, rag e savo galloud e Grist²⁷⁷.
11. Hag Elkana a zistroas d'e di e Ramata : hag ar bugel a zervije an Aotrou dirag Heli ar Beleg-braz.
12. Hogen mibien Heli, a oa bugale Belial, ha na anavezent ket an Aotrou,
13. Na karg ar veleien e-keñver ar bobl : rag pa laze unan bennag eur viktim, paotr ar beleg a zeue, endra ma poazed ar hig, hag e talhe eur forhig tri-bezeg en e zorn ;
14. Hag e lakae anezi er gaoter, pe er billig, pe er pod-houarn, pe er pod-pri : ha kement a zave ar forhig, e kemere ar beleg evitañ. Evel-se e reent d'ar re oll euz a Izrael a zeue da Zilo.
15. A-barz ma oa devet al lard, e teue ivez paotr ar beleg hag e lavare d'an hini a ginnige ar viktim : Ro din kig, evid ma e likin da boaza evid ar beleg : rag ne gemerin ket diganez kig poaz, hogen kig kriz.
16. Hag an hini a ginnige ar viktim a lavare : Ra vezo devet hirio da genta al lard hervez ar hiz, ha kemer evidout kement ha ma kiri. Hag ar paotr a lavare dezañ : Nann ; bremañ e roi, anez e kemerin dre nerz.
17. Hag evel-se pehed ar baotred-se a oa braz-meurbed dirag an Aotrou, o veza ma tistroent an dud euz a sakrifis an Aotrou.
18. Hogen ar bugel Samuel a zervije dirag an Aotrou, hag eñ gourizet gand eun efod lin.
19. Hag e vamm a ree dezañ eur zae, a zouge dezañ d'an deiziou lid, pa bigne gand heh ozah evid kinniga an ostiv liduz.
20. Hag Heli a vennigas Elkana hag e wreg, hag e lavaras dezañ : Ra roy dit an Aotrou had euz ar wreg-se evid ar gouestl eh-eus greet d'an Aotrou. Hag hi a zistroas d'o hêr.
21. Hag an Aotrou a vizitas Anna, hag hi a engehentas, hag a hanas tri mab ha diou verh : hag ar bugel Samuel a zeuas da veza braz dirag an Aotrou.
22. Hogen Heli a oa koz-braz, hag eñ a glevas kement a ree e vibien e-keñver Izrael oll ; ha penaoz ez eent da gouska gand ar merhed a evesae ouz dor an tabernakl.
23. Hag eñ a lavaras dezo : Perag e rit-hu an traou-ze a glevan da lavaroud gand ar bobl oll, traou euz ar re wasa ?
24. Na rit mui kement-se, va mibien : rag n'eo ket eur vrud vad a glevan, penaoz e likit pobl an Aotrou da derri e hourhemennou.
25. Mar peh eun den a-eneb eun den, e hell Doue beza habaskaet en e geñver : hogen mar peh eun den a-eneb an Aotrou, piou a bedo evitañ ? Hag i ne glevjont ket mouez o zad ; o veza ma felle d'an Aotrou o lakaad da vervel.

²⁷⁷ galloud e Grist : galloud an hini bet eouliet gantañ.

26. Hogen ar bugel Samuel a greñvee hag a greske, hag a blijie da Zoue kerkoulz ha d'an dud.

27. Koulskoude eun den Doue a zeuas da gavoud Heli, hag a lavaras dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou : Ha n'on ket en em ziskouezet splann da di da dad, pa edont en Ejipt e ti Faraon ?

28. Hag e zilennet em-eus e-kreiz oll vreuriezu Izrael evid beza da veleg din, evid ma pignje ouz an aoter, ma tevje ezañs din ha ma tougje eun efod dirazon : ha roet em-eus da di da dad lod euz a oll sakrifisou bugale Izrael.

29. Perag hoh-eus-hu distaolet a daoliou treid va viktim hag an traou em-eus gourhemennet da ginniga din en templ. Hag hoh-eus-hu enoret ho mibien dreiston, o tebri ganto an tammou kenta euz a sakrifisou Izrael, va fobl ?

30. Rag-se e lavar an Aotrou, Doue Izrael : Lavaret hag adlavaret em-eus penaoz da di ha ti da dad a zervijfe dirazon da viken ; hogen bremañ, eme an Aotrou, ema pell kement-se diouzin : rag neb a enoro ahanon, eh enorin anezañ ; ha neb a zisprizo ahanon, e tisprizin anezañ.

31. Setu e teuy eun amzer, e pehini e trohin da vreh, ha breh ti da dad²⁷⁸, evid na vezo den koz ebed en da di.

32. Ha te a welo da geverer en templ, e oll eurvad Izrael : ha ne vezo biken mui a zen koz en da di.

33. Koulskoude ne bellain ket a-grenn ar re oll euz da ouenn dioh va aoter : hogen lakaad a rin da zaoulagad da deñvellaad ha da galon da zizeha : hag al lod braz euz da di²⁷⁹ a varvo pa vezint deuet d'an oad a zen.

34. Hag ar pez a vezo da arouez dit, eo ar pez a hoarvezo gand da zaou vab, Ofini ha Fineez : en eun heveleb deiz e varvint o-daou.

35. Ha me a lakay da zevel din eur beleg feal, pehini a ray hervez va halon hag hervez va ene : ha me a zavo dezañ eun ti feal, hag eñ a gerzo bepred dirag va Hrist²⁸⁰.

36. Hogen c'hoarvezoud a ray penaoz neb a chomo euz da di, a zeuy evid ma vezo pedet evitañ ; hag eñ a ginnigo eur pez arhant hag eun dorz vara, hag e lavaro : Ro din, me az ped, lod ar beleg, evid ma tebrin eur genaouad bara.

III. Pennad.

Disklêria a ra Doue da Samuel ar pez ez a da ober a-eneb ti Heli.

1. Hogen ar bugel Samuel a zervije an Aotrou dirag Heli ; ha ger an Aotrou a oa talvouduz-braz en deziou-ze, ha ne oa ket a weledigez anad.

2. C'hoarvezoud a reas eun deiz, penaoz Heli a oa kousket en e leh²⁸¹ ; hag e zaoulagad a oa deuet da deñvellaad, ha ne helle ket gweloud :

3. A-barz ma oa mouget kleuzeur Doue, e kouske Samuel e templ an Aotrou, el leh ma edo arh Doue :

4. Hag an Aotrou a halvas Samuel. Hag eñ a lavaras : setu-me.

5. Hag eñ a redas etrezeg Heli, hag a lavaras : Setu-me : rag va galvet eh-eus. Hag Heli a lavaras : N'em-eus ket da halvet : distro, ha kousk. Ha Samuel a yeas kuit hag a gouskas.

²⁷⁸ breh ti da dad : ?

²⁷⁹ da di : tud da di. Implijoud a ra "ti" aliez evid "tud an ti".

²⁸⁰ va Hrist : an hini bet eouliet ganin.

²⁸¹ en e leh : e leh Samuel.

6. Hag an Aotrou a halvas adarre Samuel. Ha Samuel, o veza savet, a yeas etrezeg Heli, hag a lavaras : Setu-me ; rag va galvet eh-eus. Hag Heli a lavaras : N'em-eus ket da halvet, va mab : distro ha kousk.

7. Hogen Samuel ne anaveze ket c'hoaz an Aotrou, ha ger an Aotrou ne oa ket bet c'hoaz disklêriet dezañ.

8. Hag an Aotrou a halvas adarre Samuel eun drede gwech. Hag eñ o veza savet, a yeas etrezeg Heli,

9. Hag a lavaras : Setu-me ; rag va galvet eh-eus. Heli a anavezaz neuze penaoz en-doa an Aotrou galvet ar bugel ; hag e lavaras da Zamuel : Kee, ha kousk : ha mar da halver c'hoaz eur wech, e liviri : Komz, Aotrou : rag da zervijer a zelaou. Samuel a yeas eta hag a gouskas en e leh.

10. Hag an Aotrou a zeuas, a zavas hag a halvas evel m'en-doa galvet kent : Samuel, Samuel. Ha Samuel a lavaras : Komz Aotrou ; rag da zervijer a zelaou.

11. Hag an Aotrou a lavaras da Zamuel : Setu ez an da ober eun dra en Izrael ha piou bennag e glevo, e voudo e ziskouarn dezañ.

12. Ober a rin en deiz-se, a-eneb Heli hag a-eneb e di, kement em-eus lavaret : deraoui ha peurober a rin.

13. Rag diouganet em-eus dezañ penazoz e varnjen e di da viken, en abeg d'e fallagriez ; rag petra bennag ma ouie penaoz e vibien en em wall-rene, n'en-deus ket o hastizet.

14. Rag-se em-eus touet da di Heli, penaoz ne vezo biken gwalhet fallagriez e di gand viktimou na gand roou.

15. Hogen Samuel a gouskas beteg ar mintin hag e tigoraz doriou ti an Aotrou. Ha ne grede ket Samuel rei da anaoud e weledigez da Heli.

16. Heli eta a halvas Samuel, hag a lavaras : Samuel, va mab. Hag eñ a lavaras : Setu-me.

17. Hag Heli a houlennas digantañ : Petra en-deus lavaret an Aotrou dit ? N'her huz ket ouzin, me az ped. Ra ray kement-se dit ha kemend-all ouspenn, mar kuzez ouzin ger ebed euz ar re a zo bet lavaret dit.

18. Samuel eta a lavaras pep tra dezañ, ha ne guzas netra outañ. Hag Heli a lavaras : An Aotrou eo : ra ray ar pezh a vezo mad dirag e zaoulagad.

19. Hogen Samuel a greske ; hag an Aotrou a oa gantañ, hag hini euz e heriou ne gouezas d'an douar.

20. Hag Izrael oll a anavezaz, adaleg Dan beteg Beresabee, penaoz Samuel a oa eur profed feal d'an Aotrou.

21. An Aotrou en em ziskouezaz adarre e Silo, rag e Silo eo e oa en em ziskouezet an Aotrou da Zamuel hervez ger an Aotrou. Hag ar pezh en-doa lavaret Samuel da Izrael oll a oe sevenet.

IV.Pennad.

Brezel ar Filinistined a-eneb bugale Izrael. Maro Heli.

1. En deiziou-ze ar Filinistined en em zastumas evid brezelekaad : ha bugale Izrael a ziarbennas ar Filinistined evid stourmi outo ; hag ar re-mañ a stegnas o hamp 'lez Mên ar skoazell²⁸² : hag ar Filinistined a zeuas da Afek,

²⁸² skoazell : ? .marteze "skoasell".

2. Hag a reizas o arme a-eneb Izrael. Hogen pa zeraouas an emgann, Izrael a droas e gein d'ar Filinistined ; hag i o veza en em skignet dre ar parkeier, e oe lazeta en emgann-ze war-dro pevar mil den.

3. Hag ar bobl a zistroas d'ar hamp : hag henaoured Izrael a lavaras : Perag en-deus an Aotrou skoet ganeom hirio dirag ar Filinistined ? Degasom amañ euz a Zilo arh kevredigez an Aotrou, ha deuet, en or hreiz, evid ma tenno ahanom euz a zaouarn on enebourien.

4. Ar bobl a gasas eta tud da Zilo, hag e oe degaset ahano arh kevredigez Aotrou an armeou azezet war ar gerubined²⁸³ : ha daou vab Heli, Ofi ha Finees, a oa gand arh kevredigez Doue.

5. Ha pa oe deuet arh kevredigez an Aotrou er hamp, Izrael oll en em lakaas da yuda gand eur garm braz, hag an douar a zassonas.

6. Ha pa glevas ar Filinistined an trouz-se, e leverjont : Petra eo an trouz braz-se e kamp an Hebreed ? Hag i a glevas penaoz arh an Aotrou a oa deuet er hamp.

7. Hag ar Filinistined o-doe aon, hag a lavaras : Deuet eo Doue er hamp-se. Hag i a geinvanas, o lavaroud :

8. Gwa ni ; rag ne oa ket eul levnez ker braz deh na derhent ; gwa ni. Piou a denno ahanaom euz a zorn an doueed ken gallouduz-se ? An doueed-se eo o-deus skoet gand eur goul ker braz an Ejiptianed en distro.

9. En em greñvait, Filinistined, ha bezit tud kaloneg ; gand aon na zeujeh sklaved d'an Hebreed, evel ma int bet sklaved deoh : en em greñvait, ha brezelekait.

10. Ar Filinistined a yeas d'an emgann, hag Izrael a oe trehet ; ha pep hini anezo a dehas etrezeg e del. Ha braz-meurbed e oe al lazerez, rag koueza a reas euz a Izrael tregont mil den war droad.

11. Hag arh Doue a oe kemeret ; ha daou vab Heli, Ofni ha Fineez, a varvas.

12. Hogen eun den euz a Venjamin o tiredeg euz an arme, a zeuas en deiz-se da Zilo, hag eñ roget e zillad, ha goloet e benn a boultr.

13. Ha pa zeuas hemañ, Heli a oa azezet war e gador a oa troet ouz an hent ; rag e galon a oa leun a aon evid arh Doue. Hogen pa oe deuet an den-ze e kêr, ha pa en-doe roet ar helou, oll gêr en em lakaas da harmi.

14. Hag Heli o klevoud trouz ar garm, a lavaras : Petra eo an trouz braz-se a glevan ? Hga an den-ze a zeuas buan hag a roas ar helou da Heli.

15. Hogen Heli en-doa triweh vloaz ha pevar-ugent ; e zaoulagad a oa teñvallaet, ha ne helle ket gweloud.

16. Hag an den a lavaras da Heli : Me a zeu euz an emgann, me eo a zo tehet hirio euz an arme. Hag Heli a lavaras dezañ : Petra a zo c'hoarvezet, va mab ?

17. Hag an den en-doa degaset ar helou a lavaras : Izrael en-deus tehet dirag ar Filinistined, hag eul lazerez braz a zo bet greet e-touez ar bobl : hag ouspenn, da zaou vab, Ofni ha Fineez, a zo maro ; hag arh Doue a zo kemeret.

18. Ha pa en-doe e-unan anvet arh Doue, Heli a gouezas euz e gador a-hwen e gorr e-tal an nor, hag o veza torret e houzoug, e varvas. Koz e oa hag hir-hoalet, hag eñ en-doe barnet Izrael e-pad daou-ugent vloaz.

19. Hogen e verh-kaer, gwreg Fineez, a oa brazez ha dare da houilioudi : ha pa glevas penaoz e oa kemeret arh Doue, hag e oa maro he zad-kaer hag heh ozah, e stouas hag e houilioudas : rag ar gwentrou a oa kroget enni en eun taol.

20. Hogen pa edo-hi dare da vervel, ar gwragez a oa war he zro a lavaras dezi : N'az-pezh ket a aon, rag eur mab eh-eus ganet : hag hi ne lavaras netra, ha ne reas van ebed.

²⁸³ ar gerubined : kerubin, kêzig-Doue.

21. Hag hi a halvas ar bugel Ichabod, o lavaroud : Tennet eo ar hloar euz a Izrael, o veza ma eo bet kemeret arh Doue, hag en abeg d'he zad-kaer ha d'he ozah ;

22. Hag hi a lavaras : Tennet eo ar hloar euz a Izrael, o veza ma eo bet kemeret arh Doue.

V. Pennad.

An arh a ziskar idol Dagon. Doue a zegas goulou war ar Filinistined.

1. Hogen ar Filinistined a gemeras arh Doue hag a zegasas anezi euz al leh anvet Mên ar skoazell da Azot.

2. Ar Filinistined a gemeras arh Doue hag a zegasas anezi e templ Dagon, hag a lakaas anezi e-kichen Dagon.

3. Antronoz an Azotied o veza savet da houlou-deiz, a gavas Dagon kouezet d'an douar war e henou dirag arh an Aotrou, hag i a gemeras Dagon, hag a lakaas anezañ adarre el leh ma'z edo.

4. Antronoz o veza savet adarre diou ar mintin, e kavjont Dagon kouezet d'an douar war e henou dirag arh an Aotrou. Hogen penn Dagon hag e zaouarn, pere a oa trohet, a oa war dreuzou an nor :

5. Ne oa chomet euz a Zagon nemed ar horv el leh ma'z edo. Rag se eo beleien Dagon hag ar re oll a ya en e dempl e Azot, ne valeont ket beteg-henn war dreuzou an nor.

6. Hogen dorn an Aotrou a bonnerraas war an Azotied, hag eñ a wastas anezo, hag a skoas ar re euz a gêr hag ar re diwar ar mêz el leh kuzet euz o horv²⁸⁴. Oll vourhiou hag oll barkeier ar vro-ze a varvas gand an niver braz a razed a zeuas enno : hag eur verventi vraz a oe gwelet e kêr.

7. An Aozotied o weloud ar goulou-ze, a lavaras : Na chomet ket arh Doue Izrael en or hreiz : rag kaled eo e zorn warnom, ha war Dagon, on Doue.

8. Hag i a strollas oll briñsed ar Filinistined, hag a lavaras dezo : Petra a raim-ni euz a arh Doue Izrael ? Ha tud Get a lavaras : Ra vezo kaset arh Doue Izrael tro-war-dro²⁸⁵. Hag i a gasas arh Doue Izrael tro-war-dro.

9. Hogen pa zougent anezi tro-war-dro, dorn an Aotrou en em astennas war ar hêriou oll gand eul lazerez braz-meurbed : hag eñ a skoas gand oll wazed ar hêriou-ze, adaleg ar vihanna beteg ar vrasa, hag o bouzellou o tidarza²⁸⁶ a zeue da vreina. Tud Get a gemeras kuzul an eil gand egile hag a reas evito kadoriou krehin.

10. Kas a rejont eta an arh da Akkaron. Ha pa oa deuet an arh da Akkaron, an Akkaronied en em lakaas da harmi ha da lavaroud : Degaset o-deus deom arh Doue Izrael evid ma ol lazo ni hag or pobl.

11. Neuze e tastumjont oll briñsed ar Filinistined, pere a lavaras dezo : Kasit kuit arh Doue Izrael, ma tistroy d'he leh, ha na lazo mui ni hag or pobl.

12. Rag spont ar maro a oa en em skignet dre an oll gêriou, ha dorn Doue en em bounnerrae kalz warnezo. An dud pere na varvent ket a oe skoet el leh kuzet euz o horv ; ha garm pep kêr a bigne beteg an neñv.

VI. Pennad.

²⁸⁴ el leh kuzet euz o horv : toull o reor (gwazrudeziou).

²⁸⁵ tro-war-dro : da Het.

²⁸⁶ o tidarza : o tarza.

Ar Filinistined a gas kuit an arh.

1. Arh an Aotrou a oa bet seiz miz e bro ar Filinistined.
2. Hag ar Filinistined a halvas ar veleien hag an diouganerien, hag a lavaras dezo : Petra a raim-ni euz a arh an Aotrou ? Diskouezit deom penaoz e kasim anezi adarre d'he leh. Hga i a lavaras :
3. Mar kasit kuit arh Doue Izrael, n'he hasit ket goulo ; hogen roit ar pez a dleit dezañ evid ho pehed, ha neuze e yahaot ; hag e ouiot perag ne zistro ket e zorn diwarnoh.
4. Hag i a lavaras : Petra a dleom-ni da rei dezañ evid or pehed ? Hag ar re all a lavaras :
5. Grit pemp reor aour ha pemp raz aour, hervez an niver euz a broviñsou ar Filinistined ; rag eun heveleb gouli a zo deuet warnoh oll ha war ho priñsed. Ober a reot eta skeudennou euz ho reoriou, ha skeudennou ar razed o-deus gwastet ho touar ; hag e root gloar da Zoue Izrael, ha marteze e tenno e zorn diwarnoh, diwar ho toueed ha diwar ho touar.
6. Perag e pounnerrait-hu ho kalonou, evel an Ejiptianed, hag evel ma pounnerras Faraon e galon ? Goude ma oa bet skoet, ha n'o hasas ket kuit, ha n'o lezas ket da vond ?
7. Kemerit eta bremañ eur harr a vezo bet greet nevez ganeoh : ha sternit ouz ar harr diou vuoh halet, war bere n'eo ket bet lakaet ar yeo kent, ha dalhit o leueou en ti.
8. Kemerit arh an Aotrou, ha likit hi war ar harr, ha goude beza lakaet en eun tu anezañ en eur skrin ar skeudennou aour ho-pezo kinniget evid ho pehed, list i da vond.
9. Ha likit evez : Mar pign dre an hent a ya d'e vro e-unan etrezeg Betsamez, eo eñ en-deus greet deom an droug braz-se : ha ma ne da ket di, e ouezim penaoz n'eo ket e zorn en-deus skoet ganeom, hogen ma eo c'hoarvezet kement-se dre zarvoud.
10. Ar re-mañ a reas eta en doare-ze : hag o kemeroud diou vuoh o vaga o leueou gand o lêz, e sternjont anezo ouz ar harr, hag e talhjont al leueou en ti :
11. Hag e lekejont arh Doue war ar harr, hag ar skrin e pehini edo ar razed aour ha skeudennou o reoriou.
12. Hogen an diou vuoh a yeas rag-eeun, dre an hent a gas da Vetsamez ; hag i a yee a-zoug o hamm, en eur gerzoud hag en eur vleja ; ha priñsed ar Filinistined a yeas war o lerh beteg harzou Betsamez.
13. Hogen tud Betsamez a vede ar gwiniz en draonienn : hag o veza savet o daoulagad e weljont an arh, hag en em laouennajont oh he gweloud.
14. Hag ar harr a zeuas e park Jozue ar Betsamit, hag a chomas eno. Hogen bez' e oa eno eur mên braz. Hag i o veza trohet a-dammou koad ar harr, a lakaas warnezañ an diou vuoh evid kinniga ar sakrifis-losk d'an Aotrou.
15. Hogen al Levited a ziskennas arh Doue, hag ar skrin a oa en he hichenn, e pehini edo ar skeudennou aour, hag e lakajont anezo war ar mên braz. Hag ar Vetsamited a ginnigas en deiz-se sakrifisou-losk ha viktimou d'an Aotrou.
16. Ha ar pemp priñs ar Filinistined²⁸⁷, goude beza gwelet kement-se a zistroas da Akkaron en deiz-se.
17. Steu amañ ar reoriou aour a ginnigas ar Filinistined evid o fehed : Azot unan, Gaza unan, Askalon unan, Get unan, Akkaron unan :
18. Ha razed aour hevez an niver euz a gêriou ar Filinistined, er pemp proviñs, adaleg ar hêriou muriet beteg ar bourhiou divur, ha beteg ar mên braz Abel, war behini o-doa lakaet arh an Aotrou, hag a zo c'hoaz hirio e park Jozue ar Betsamit.

²⁸⁷ ar pemp priñs ar Filinistined : hag ar pemp priñs euz ar Filinistined.

19. Hogen an Aotrou a skoas war dud Betsamez, o veza m'o-doa sellet ouz arh an Aotrou ; skei a reas war deg den ha tri-ugent euz ar re vraz, ha war hanter-kant mil den euz ar re vihan euz ar bobl. Hag ar bobl a ouelas, o veza m'en-doa an Aotrou skoet ganto gand eur gouli ker braz.

20. Ha tud Betsamez a lavaras : Piou a hello chom en e zav dirag an Aotrou-ze, an Doue sant-se ? Hag e ti pehini ahanom e pigno-eñ ?

21. Hag i a gasas kannaded etrezeg tud Kariatiarim evid lavaroud dezo : Ar Filinistined o-deus degaset arh an Aotrou, diskennit, ha kasit hi ganeoh.

VII. Pennad.

Kas a reer an arh da Gariatiarim. Ar Filinistined a zo trehet.

1. Tud Kariatiarim a zeuas eta hag a zegasas ganto arh an Aotrou, hag a lakaas anezi e ti Abinadab e Gabaa. Hag i a ouestlas Eleazar, e vab, evid miroud arh an Aotrou.

2. Kalz a amzer oa abaoe ma edo arh an Aotrou e Kariatiarim (rag ugent vloaz a oa dija), hag oll di Izrael a ehane oh heulia an Aotrou.

3. Neuze Samuel a gomzas ouz oll di Izrael, o lavaroud : Mar distroit ouz an Aotrou a-greiz ho kalon , tennit euz ho kreiz an doueed a-ziavêz, Baalim hag Astarot ; hag aozit ho kalonou d'an Aotrou, ha na zervijit nemetañ ; hag eñ a denno ahanoh euz a zaouarn ar Filinistined.

4. Bugale Izrael a zistaolas eta Baalim hag Astarot, hag a zervijas an Aotrou hepken.

5. Ha Samuel a lavaras : Strollit Izrael oll e Masfat, evid ma pedin an Aotrou evidoh.

6. Hag i en em zastumas e Masfat : tenna a rejont dour a skuilljont dirag an Aotrou ; hag i a yunas en deiz-se, hag a lavaras eno : Pehet on-eus a-eneb an Aotrou. Ha Samuel a varnas bugale Izrael e Masfat.

7. Ha pa glevas ar Filinistined penaoz e oa strollet bugale Izrael e Masfat, priñsed ar Filinistined a bignas a-eneb Izrael. Ha pa glevas bugale Izrael kement-se, o-doe aon rag ar Filinistined :

8. Hag e leverjont da Zamuel : Na ehan ket da harmi evidom etrezeg an Aotrou on Doue, evid ma tenno ahanom euz a zaouarn ar Filinistined.

9. Ha Samuel a gemeras eun oan-lêz, hag a ginnigas anezañ krenn d'an Aotrou : ha Samuel a harmas ouz an Aotrou evid Izrael, hag an Aotrou a zelaouas outañ.

10. Hogen endra ma kinnige Samuel e sakrifisou-losk, ar Filinistined a zeue d'an emgann a-eneb Izrael : an Aotrou a lakaas da straka e gurun gand eun trouz braz war ar Filinistined en deiz-se : hag eñ a spontas meurbed anezo, hag o zrehas dirag Izrael.

11. Ha tud Izrael o veza eet er-mêz euz a Vasfat, a yeas war-lerh ar Filinistined, hag a skoas ganto beteg eul leh a oa dindan Betkar.

12. Ha Samuel a gemeras eur mên, hag a lakaas anezañ etre Masfat ha Sen. Hag eñ a halvas al leh-se Mên ar skoazell ; hag eñ a lavaras : Beteg amañ en-deus an Aotrou or skoazellet.

13. Hag ar Filinistined a oe izellaet, ha ne gredjont mui dond war douarou Izrael. Ha dorn an Aotrou a oe savet war ar Filinistined e oll zeiziou Samuel.

14. Hag ar hêriou a oa bet kemeret gand ar Filinistined war Izrael, adaleg Akkaron beteg Get, a oe roet adarre da Izrael gand o harzou. Evel-se e tennas Izrael euz a zaouarn ar Filinistined ; ha peoh a oe etre Izrael hag an Amorreed.

15. Ha Samuel a varnas Izrael e oll zeiziou e vuhez.
16. Ober a ree eun dro beb bloaz da Vetel, ha da Halgala, ha da Vasfat, hag eñ a varne Izrael en oll lehiou-ze.
17. Hag eñ a zistroe da Ramata ; rag eno edo e di ; hag eno ivez e varne Izrael : hag eno ivez e savas eun aoter d'an Aotrou.

VIII. Pennad.

An Izraelited a houlenn eur roue.

1. Hogen pa oe deuet Samuel da gosaad, e lakaas e vibien da varnerien war Izrael.
2. E vab-hena a oa anvet Joel, hag an eil a oa anvet Abia ; hag i a oa barnerien e Bersabee.
3. Ha ne gerzas ket e vibien en e heñchou ; hogen en em rei a rejont d'ar bizoni, rouu a zegemerjont ha barniou fall a rejont.
4. Neuze oll henaoured Izrael en em zastumas hag a zeuas da gavoud Samuel e Ramata.
5. Hag i a lavaras dezañ : Setu out deuet da veza koz, ha da vibien ne gerzont ket en da heñchou : laka eur roue warnom, evid ma varno ahanom, evel ma o-deus an oll vroadou.
6. Ar goulenn-ze ne oe ket kavet mad gand Samuel, o veza m'o-doa lavaret : Ro deom eur roue, evid ma varno ahanom. Ha Samuel a bedas an Aotrou.
7. Hag an Aotrou a lavaras da Zamuel : Selaou mouez ar bobl e kement a lavaront dit ; rag n'eo ket te o-deus distaolet, hogen me eo, evid na renin ket warnezo.
8. Evel-se o-deus greet bepred, abaoe an deiz e pehini em-eus o zennet euz an Ejipt beteg-henn : evel ma o-deus va dilezet, ha ma o-deus servijet doueed a-ziavêz, evel-se e reont ivez dit.
9. Hogen bremañ selaou o mouez : koulskoude lavar dezo ha diougan dezo gwir ar roue a dle o rena.
10. Ha Samuel a roas da anaoud oll heriou an Aotrou d'ar bobl he-doa goulennet eur roue digantañ.
11. Hag e lavaras : Setu amañ gwir ar roue a reno warnoh : kemeroud a ray ho mibien, hag e lakay anezo ouz e girri ; marheien a ray anezo, hag o lakay da redeg a-raog e girri.
12. O lakaad a ray da vilinerien ha da gantonerien, ha da arad e barkou, ha da vedi e edou, ha da ober e armou hag e girri.
13. Euz ho merhed e ray ivez e louzaouezed, hag e geginerezed, hag e varaerezed.
14. Kemeroud a ray ivez ar gwella euz ho parkou, euz ho kwiniennou, hag euz ho kwez olived, hag e roy anezo d'e zervijerien.
15. Deogi a ray war hoh edou, ha war ho kwiniennou, evid rei d'e spazerien ha d'e vevellou.
16. Kemeroud a ray ivez ho mevellou, ho mitizien, hag ho tud yaouank ar re greñva, hag hoh azened, ha o lakay da labourad evitañ.
17. Deogi a ray ivez ho teñved, ha c'hwi a vezo da sklaved dezañ.
18. Hag en deiz-se e harmot a-eneb ho roue ho-pezo dilennet : hag an Aotrou ne zelaouo ket ahanoh en deiz-se, o veza ma eo c'hwi hoh-eus goulennet eur roue.
19. Hogen ar bobl ne fellas ket dezi selaoui mouez Samuel hag e leverjont : Nann, rag eur roue a vezo warnom ;

20. Ha ni a vezo evel an oll vroadou : hag or roue a varno ahanom, hag a yelo en or raog, hag a stourmo evidom en or brezeliou.

21. Ha Samuel a glevas oll heriou ar bobl, hag o raos da anaoud d'an Aotrou.

22. Hogen an Aotrou a lavaras da Zamuel : Selaou o mouez, ha laka eur roue warnezo. Ha Samuel a lavaras da dud Izrael : Distroet pep hini d'e gêr.

IX. Pennad.

Saul a glask azenezed e dad. Mond a ra da gavoud Samuel.

1. Bez' e oa eun den euz a Venjamin anvet Kis, mab Abiel, mab Seror, mab Bec'horat, mab Afia, mab eun den euz a Jemini, kreñv ha galloudeg.

2. Eur mab en-doa anvet Saul, den kaer ha klok : ha ne oa hini e-touez bugale Izrael gwelloc'h egetañ ; adaleg e ziskoaz e oa uhelloc'h eged an oll bobl.

3. Hogen azenezed Kis, tad Saul, a oa dianket, ha Kis a lavaras da Zaul e vab : Kemer ganez unan euz ar baotred, sao ha kee da glask an azenezed. Tremenoud a rejont dre venez Edraim,

4. Ha dre vro Salisa, ha n'o havjont ket ; tremenoud a rejont ivez dre vro Salim, ha ne oant ket eno ; ha dre vro Jemini, ha n'o havjont ket.

5. Hogen pa oent deuet da vro Suf, Saul a lavaras d'ar paotr a oa gantañ : Deus ha distroom, gand aon n'en-defe va zad greet dilez euz an azenezed, ha na ve nehet diwar or penn.

6. Hag ar paotr a lavaras dezañ : Setu eur gêr e pehini ez eus eun den Doue, eun den brudet-braz : kement a lavar, a hoarvez heb arvar : deom di bremañ : marteze e sklêrio ahanom war an abeg evid pehini om deuet.

7. Ha Saul a lavaras d'e baotr : Deom di ; hogen petra a gasim-ni d'an den Doue ? N'eus ket a vara en or zeier : ha n'on-eus nag arhant, na netra all ebed da rei d'an den Doue.

8. Hag ar paotr a gomzas c'hoaz ouz Saul : Setu em-eus kavet dindan va dorn ar bevare lodenn euz a eur sikl arhant : room-hi d'an den Doue, evid ma roy da anaoud deom on hent.

9. (Gwechall en Izrael kement hini a yee da houlenn kuzul digand Doue a lavare : Deuit, ha deom da gavoud ar Gweler. Rag neb a halver hirio Profed a oa galvet gwechall Gweler).

10. Ha Saul a lavaras d'e baotr : Mad-meurbed eo ar pezh a leverez. Deus, deom, hag i a yeas er gêr e pehini edo an den Doue.

11. Ha pa bignent dre zao kêr, e kavjont plahed yaouank pere a zeue er-mêz evid tenna dour ; hag i a lavaras dezo : Hag amañ ema ar Gweler ?

12. Hag ar plahed a lavaras dezo : Ema amañ, setu-eñ en ho raog ; hastit afo, rag deuet eo hirio e kêr, o veza ma kinnig hirio ar bobl eur sakrifis war al leh uhel.

13. Pa'z eot e kêr, her havot raktal a-barz ma pigno d'al leh uhel evid debri ; rag ar bobl ne zebro ket ken na vezo deuet eñ, o veza ma eo eñ a vennig an ostiv ; ha neuze ar re a zo galvet a zebr. Pignit eta bremañ, rag e gavoud a reot hirio.

14. Hag i a bignas da gêr. Ha pa valeent e-kreiz kêr, e weljont Samuel a zeue etrezeg enno evid pignad d'al leh uhel.

15. Hogen an Aotrou en-doa komzet ouz skouarn Samuel an deiz kent ma oa deuet Saul, o lavaroud :

16. Warhoaz d'an eur-mañ e kasin dit eun den euz a vro Benjamin, hag eh eouli anezañ da roue war va fobl a Izrael : hag eñ a zieubo va fobl euz a zaouarn ar Filistined ; o veza ma em-eus sellet ouz va fobl, ha ma eo deuet o garm beteg ennon.

17. Ha pa en-doe Samuel gwelet Saul, an Aotrou a lavaras dezañ : Setu an den euz a behini em-eus komzet dit ; henez eo a reno war va fobl.

18. Neuze Saul a dostaas ouz Samuel e-kreiz an nor, hag a lavaras : Lavar din, me az ped, peleh ema ti ar Gweler.

19. Ha Samuel a lavaras da Zaul : Me eo ar Gweler : pign em raog d'al leh uhel, evid ma tebri hirio ganen, ha warhoaz vintin az lezin da vond ; ha me a zisklêrio dit kement a zo en da galon.

20. Hag e-keñver an azenezed a zo bet dianket tri deiz 'zo, na vez ket nehet ganto, rag kavet int. Ha da biou e vezo ar gwella oll e Izrael, ma n'eo ket dit ha da oll di da dad ?

21. Ha Saul a respontas hag a lavaras : Ha n'on ket me mab Jemini, euz an disterra euz a vreuriezu Izrael, ha va ziad ne deo ket an diweza euz a oll diadou breuriezu Benjamin ? Perag eta e komzez-te evel-se ouzin ?

22. Ha Samuel a gemeras Saul hag e baotr, hag a gasas anezo er zal-debri, hag a lakaas anezo er penn uhella euz ar vanvezerien ; war-dro tregont den e oa anezo.

23. Ha Samuel a lavaras d'ar heginer : Ro an tamm em-eus roet dit, hag em-eus lavaret dit e viroud.

24. Neuze ar heginer a gemeras eur skoaz hag he lakaas dirag Saul. Ha Samuel a lavaras : Setu ar pez a zo chomet ; laka eñ dirazout, ha debr ; rag e viret em-eus a-zevri evidout, pa em-eus galvet ar bobl. Ha Saul a zebras en deiz-se gand Samuel.

25. Hga i a ziskennas euz al leh uhel da gêr, ha Samuel a gomzas gand Saul war lein an ti. Ha Saul a stegnas eur gwele war an ti hag a gouskas eno.

26. Hga o veza savet diou ar mintin, ha pa darze an deiz, Samuel a halvas Saul war lein an ti, o lavaroud : Sao, ma'z kasin kuit, ha Saul a zavas ; hag i a yeas o-daou er-mêz, da lavaroud eo, eñ ha Samuel.

27. Ha pa ziskennent el leh izella euz a gêr, Samuel a lavaras da Zaul : Lavar d'ar paotr mond en or raog ha mond e-biou : hogen te, chom eun nebeud, evid ma roin dit ger an Aotrou.

X. Pennad.

Saul eouliet gand Samuel ha lakaet da roue.

1. Hogen Samuel a gemeras eur fiolenn eoul²⁸⁸, a skuillas war penn Saul, hag eñ a bokas dezañ, hag a lavaras : Setu an Aotrou eo en-deus da eouliet da briñs war e zegouez, ha te a denno e bobl euz a zaouarn e enebourien a zo war e dro. Hag an dramañ a vezo da arouez dit, ma en-deus an Aotrou da eouliet da briñs.

2. Pa'z i kuit hirio diouzin, e kavi daou zen e-kichenn bez Rachel, e harzou Benjamin, war-zu ar hreisteiz, pere a lavaro dit : An azenezed e oas eet da glask a zo kavet : ha n'ema mui preder da dad war e azenezed, hogen nehet eo diwar ho penn, hag e lavar : Petra a rin-me e-keñver va mab ?

3. Ha pa vezi eet ahano, hag ez i e-biou evid dond da zervenn Tabor, en em gavo ganez eno tri den a bigno etrezeg Doue e Betel, hag unan anezo a zougo tri menn gavr, hag eun all teir zorz vara ; hag eun all eur voutaillad win.

²⁸⁸ eur fiolenn eoul : galleg, ha brezoneg fall : eur fiolennad eoul.

4. Ha goude m' o-devezo da zaludet, e roint dit daou vara ; ha te o hemero euz o daouarn.
5. Goude-ze e teui da zraonienn Doue, e peleh ez eus eur gward Filinistined. Ha pa vezi eet e kêr, en em gavi gand eur vandenn profeded a ziskenno euz al leh uhel, hag en o raog lirennou, ha taboulinou, ha sutellou, ha telennou, hag i o tiougani.
6. Ha spered an Aotrou en em daolo warnout, hag e tiougani ganto, hag e vezi troet en eun dra all.
7. Pa vezo eta c'hoarvezet an oll aroueziou-ze ganez, gra kement en em gavo da ober, rag an Aotrou a zo ganez.
8. Ha te a ziskenno em raog da Halgala (rag me a ziskenno d'az kavoud), evid ma kinnigi eur sakrifis, ha ma lazi viktimou a beoh : e-pad seiz devez e hortozi ahanon, ken na zeuin d'az kavoud ha na ziskouezin dit petra a dlei da ober.
9. Kerkent eta ha ma troas Saul e gein evid mond kuit dioh Samuel, Doue a roas dezañ eur galon all, hag an oll aroueziou-ze a hoarvezas gantañ en deiz-se.
10. Pa oant deuet d'ar grehienn a oa merket dezañ, eno e kavjont eur vandenn profeded. Ha spered an Aotrou en em daolas warnezañ, hag eñ a ziuganas en o hreiz.
11. Hogen ar re oll pere o-doa e anavezet ne oa ket pell, o weloud penaoz edo gand ar brofeded hag e tiougane, a lavare an eil d'egile : Petra a zo c'hoarvezet gand mab Kis ? Hag e-touez ar brofeded ema Saul ?
12. Ha re all a lavare dezo : Ha piou eo o zad-i ? Rag-se e oe troet e lavar-goloet : hag e-touez ar brofeded ema Saul ?
13. Hogen paoueza a reas da ziougani, hag e teuas d'al leh uhel.
14. Hag eontr Saul a lavaras dezañ ha d'e baotr : Peleh oh-hu bet ? Hag i a lavaras : Da glask an azenezed : hag o veza n'o havem ket, om deuet da gavoud Samuel.
15. Hag e eontr a lavaras dezañ : Lavar din petra en-deus lavaret Samuel dit.
16. Ha Saul a lavaras d'e eontr : Lavaret en-deus deom penaoz e oa kavet an azenezed. Hogen ne lavaras ket dezañ ar pez en-doa lavaret Samuel diwar-benn ar garg a roue.
17. Ha Samuel a strollas ar bobl dirag an Aotrou e Masfa :
18. Hqag e lavaras da vugale Izrael : Setu petra a lavar an Aotrou, Doue Izrael : Me eo em-eus tennet Izrael euz an Ejipt, hag em-eus ho tieubet euz a zaouarn an Ejiptianed, hag euz a zaouarn an oll roueed a halhare ahanoh.
19. Hogen c'hwi hirio hoh-eus distaolet ho Toue, pehini hepken en-deus ho tennet euz hoh oll boaniou hag euz hoh oll ankeniou, hag hoh-eus lavaret : A neb hent ; hogen laka eur roue warnom. Savit eta bremañ dirag an Aotrou, hervez ho preuriezou, hag hervez ho tiadou.
20. Ha Samuel a daolas ar sort war oll vreuriezou Izrael, hag e kouezas war breuriez Benjamin.
21. E deurel a reas neuze war breuriez Benjamin hag he herentiezou, hag e kouezas war kerentiez Metri, hag e teuas beteg Saul, mab Kis. E glask a rejont eta, ha ne oe ket kavet.
22. Ha goude-ze e houlennjont digand an Aotrou mar teuje di. Hag an Aotrou a lavaras : Setu eo kuzet en e di.
23. Hag i a redas hag a zegasas anezañ ahano. Ha pa zavas e-kreiz ar bobl en em gavas uhelloh adaleg e ziskoaz eged an oll bobl.
24. Ha Samuel a lavaras d'an oll bobl : C'hwi a wel an hini en-deus dibabet an Aotrou, ha penaoz n'eus hini heñvel outañ e-touez an oll bobl. Hag an oll bobl a grias : Ra vezo ar Roue.
25. Neuze Samuel a roas da anaoud d'ar bobl lezenn ar rouelez, hag a skrivas anezi en eul levr a lakaas dirag an Aotrou. Ha Samuel a gasas kuit ar bobl, pep hini d'e di.

26. Saul a zistroas ivez d'e di e Gabala, ha lod euz an arme, ar re a oa bet tenerraet o halon gand Doue, a yeas gantañ.

27. Hogen mibien Beliel a lavaras : Hag hemañ a hello on diboania ? Hag i a zisprizas anezañ, ha ne zegasjont ket a roou dezañ. Hogen Saul ne reas van oh o hlevoud.

XI. Pennad.

Saul a dreh an Amorreed.

1. War-dro eur miz goude, e pignas Naas, an Ammonit, hag e teuas da stourmi ouz Jabez Galaad. Hag oll dud Jabez a lavaras da Naas : Gra kevredigez ganeom, ha ni a vezo dindan da veli.

2. Ha Naas, an Ammonit, a lavaras dezo : Ar gevredigez a rin ganeoh, eo ma tennin ho lagad dehou da bep hini ahanoh, ha ma ho likiin da veza mez dre Izrael oll.

3. Hag henaoured Jabez a lavaras dezañ : Aotre deom seiz devez, evid ma kasim kannaded da oll harzou Izrael : ha ma ne vez den evid on divenni, ez aim er-mêz d'az kavoud.

4. Ar gannaded a zeuas eta da Halabaa Saul, hag a lavaras kement-se dirag ar bobl : hag an oll bobl a zavas he mouez, hag en em lakaas da ouela.

5. Ha setu Saul a zeue euz ar park war-lerh e ejenned, hag e lavaras : Petra 'zo m'ema ar bobl o ouela ? Hag e lavarjont dezañ ar pêz o-doa lavaret tud Jabez.

6. Hag e teuas spred an Aotrou war Saul pa glevas ar homziou-ze, hag e savas eun droug braz ennañ.

7. Hag eñ a gemeras e zaou ejen, hag a drohas anezo a-dammou, hag o hasas da oll harzou Izrael dre zaouarn ar gannaded, o lavaroud : Neb na zeuy ket er-mêz war-lerh Saul ha Samuel, e vezo greet evel-se d'e ejenned. Doujañs an Aotrou a grogas eta er bobl, hag i a zellas er-mêz evel eun den hepken.

8. Ha pa niveras anezo e Bezec'h, eb em gavas tri-hant mil a vibien Izrael, ha tregont mil a dud Juda.

9. Hag i a lavaras d'ar gannaded a oa deuet : An dra-mañ a leverot da dud Jabez Galaad : Warhoaz e viot diboaniet pa vezo tomm an heol. Ar gannaded a yeas hag a lavaras kement-se da dud Jabez, pere en em laouennaas.

10. Hag i a lavaras : Warhoaz vintin ez aim er-mêz d'ho kavoud ; ha c'hwi a ray deom ar pez a gerot.

11. Ha pa oe deuet antronoz, Saul a lakaas ar bobl e teir lodenn ; hag o veza eet e-kreiz ar hamp da houlou-deiz, e trehas an Ammonited, ken na zeuas an heol da veza tomm ; hag ar re a chomas a oe skignet, en heveleb doare na oe ket kavet daou an eil gand egile.

12. Hag ar bobl a lavaras da Zamuel : Piou eo hennez a lavare : Ha Saul a reno ahanom ? Roit an dud-se deom, ha ni o lakay da vervel.

13. Ha Saul a lavaras : Ne vezo lazet den en deiz-mañ ; rag hirio eo en-deus an Aotrou diboaniet Izrael.

14. Neuze Samuel a lavaras d'ar bobl : Deuit, ha deom da Halgala, ha nevezom eno ar roue.

15. Hag an oll bobl a yeas da Halgala ha a lakaas Saul da roue dirag an Aotrou e Galgala : hag i a lazas eno viktimou a beoh dirag an Aotrou. Ha Saul hag oll dud Izrael a oe laouen-kaer eno.

XII. Pennad.

Samuel a rebech d'ar bobl he dizanaoudegez e-keñver Doue.

1. Hogen Samuel a lavaras da Izrael oll : Setu em-eus selaouet ho mouez, e kement hoh-eus goulennet diganen ; ha lakaet em-eus eur roue warnoh.
2. Ha bremañ e kerz eur roue en ho raog. Hogen me a zo koz hag e wenna va fenn ; ha setu va mibien a zo ganeoh. Bevet em-eus en ho touez adaleg va yaouankiz bete-vremañ, ha setu on dare.
3. Testenit diwar va fenn dirag an Aotrou ha dirag e eouliet²⁸⁹, ma em-eus kemeret ejenn eur re, pe e azen : ma em-eus tamallet den e gaou, ma em-eus gwallgaset den, ma em-eus kemeret roou digand den ; ha me a zisprizo hirio kement-se, hag e zistaolo deoh.
4. Hag i a lavaras : N'eh-eus ket on tamallet : n'eh-eus ket or gwallgaset ; n'eh-eus ket kemeret netra digand den ebed.
5. Hag eñ a lavaras dezo : Test eo an Aotrou en hoh eneb, ha test eo e eouliet en deiz-mañ, penaoz n'hoh-eus kavet netra etre va daouarn. Hag i a lavaras : Test eo.
6. Ha Samuel a lavaras d'ar bobl : An Aotrou eo, pehini en-deus greet Moizez hag Aaron, hag en-deus tennet ho tadou euz a zouar an Ejipt.
7. Savit eta bremañ evid ma ho kalvin e barn dirag an Aotrou, evid an oll drugareziou en-deus bet en ho keñver hag e-keñver ho tadou.
8. Pa oe deuet Jakob en Ejipt, ha pa harmas ho tadou etrezeg an Aotrou, an Aotrou a gasas Moizez hag Aaron, a dennas ho tadou euz an Ejipt hag e lakaas anezo el leh-mañ.
9. Ha pa ankounac'hajont an Aotrou o Doue, e lakaas anezo etre daouarn Sisara, mestr arme Hasor, hag etre daouarn ar Filinistined, hag etre daouarn roue Moab, pere a stourmas outo.
10. Hogen goude-ze harmjont etrezeg an Aotrou, hag e leverjont : Pehet on-eus o veza ma on-eus dilezet an Aotrou, ha ma on-eus servijet Baalim hag Astarot ; hogen bremañ tenn ahanom euz a zaouarn on enebourien, hag e servijim ahanout.
11. Hag an Aotrou a gasas Jerobaal, ha Badan, ha Jefte, ha Samuel, hag a dennas ahanoh euz a zaouarn hoh enebourien war ho tro, hag oh chomet e fiziañs.
12. Hogen pa weljoh penaoz Naas, roue bugale Ammon, a zeue en hoh eneb, hoh-eus lavaret din : A neb hent, hogen eur roue a reno warnom ; petra bennag ma rene an Aotrou ahanoh.
13. Bremañ eta hoh-eus ho roue a zo bet dibabet ganeoh, a zo bet goulennet ganeoh. Setu en-deus roet an Aotrou eur roue deoh.
14. Mar doujit an Aotrou ha mar servijit anezañ, mar selaouit e vouez, ha ma ne zavit ket a-eneb ger an Aotrou, c'hwi a vezo, hag ar roue a ren ahanoh, war heul an Aotrou, ho Toue.
15. Hogen mar ne zelaouit ket mouez an Aotrou, ha ma savit a-eneb d'e her, dorn an Aotrou a vezo warnoh evel m'eo bet war ho tadou.
16. Hogen bremañ savit, ha sellit ouz an dra vraz ema an Aotrou oh ober dirag ho taoulagad.
17. Ha n'eo ket hirio e veder ar gwiniz ? Me a halvo an Aotrou, hag eñ a zegaso kurun ha glao : evid ma teufeh da houzoud ha da weloud peger braz eo dirag an Aotrou an droug hoh-eus greet o houlen eur roue evidoh.

²⁸⁹ eouliet : an hini eouliet.

18. Ha Samuel a harmas ouz an Aotrou, hag an Aotrou a zegasas kurun ha glao en deiz-se.

19. Hag an oll bobl a zoujas meurbet an Aotrou ha Samuel ; hag an oll bobl a lavaras da Zamuel : Ped an Aotrou, da Zoue, evid da zervijerien, evid na varvim ket : rag lakaet on-eus an droug-se war or pehejou all, ma on-eus goulent eur roue evidom.

20. Ha Samuel a lavaras d'ar bobl : N'ho-pezet ket a aon ; c'hwi eo hoh-eus greet an oll zroug-ze : koulskoude na droit ket ho kein d'an Aotrou, hogen servijit an Aotrou a-greiz ho kalon.

21. Ha na droit ket ouz traou gwan, pere ne dalvezint netra deoh ha na ziboanint ket ahanoh, o veza ma'z int gwan.

22. Hag an Aotrou ne zilezo ket e bobl, en abeg d'e ano braz : rag touet en-deus an Aotrou ho lakaje da veza e bobl.

23. Hogen Doue ra viro ahanon dioh ar pehed-se, ma ehanfen da bedi an Aotrou evidoh ; deski a rin deoh an ehent mad hag eeun.

24. Doujit eta an Aotrou ha servijit anezañ er wirionez hag a-greiz ho kalon ; rag gwelet hoh-eus ar burzudou en-desus greet en ho touez.

25. Mar kendalhit en droug, c'hwi hag ho roue a yelo da goll war eun dro.

XIII. Pennad.

Ar Filinistined a zo trehet gand Jonatas. Dizentidigez Saul.

1. Evel eur bugel bloaz e oa mab Saul, pa zeuas da reni, hag eñ a renas er hiz-se daou vloaz war Izrael.

2. Ha Saul a zilennas evitañ tri mil den euz a Izrael : daou vil a oa gand Saul e Mac'hmas, ha war menez Betel, ha mil gand Jonatas e Gabaa Benjamin ; hag ar re all euz ar bobl a oe kaset pep hini d'e delt.

3. Ha Jonatas a drehas gward ar Filinistined a oa e Gabaa, hag ar Filinistined a glevas kement-se : ha Saul a lakaas da zeni trompillou dre an oll vro, o lavaroud : Ra glevo an Hebreed.

4. Hag oll Izrael a glevas ar vrud-mañ : Trehet eo bet gand Saul gward ar Filinistined. Hag Izrael a zavas a-eneb ar Filinistined : hag ar bobl en em zastumas gand garmou en-dro Saul e Galgala.

5. Ar Filinistined en em strollas ivez evid stourmi a-eneb Izrael, gand tregont mil karr, ha c'hweh mil marheg, hag ar re all euz ar bobl, ker braz o niver hag an trêz a zo war aod ar mor. Hag i a bignas hag a stegnas o hamp e Mac'hmas, war-zu ar sav-heol euz a Vethaven.

6. Pa welas tud Izrael penaoz e oant stardet striz (rag ar bobl a oa glaharet), en em guzjont er heviou hag er hognouigou hag er reier hag er mougeviou hag er puñsou-glao.

7. Hogen an Hebreed all a dreuzas ar Jourdan dirag bro Gad ha Galaad. Ha pa edo c'hoaz Saul e Galgala, an oll bobl a heulie anezañ a oa spontet-braz.

8. Hag eñ a hortozas e-pad seiz devez, hervez m'en-doa kemennet Samuel, ha Samuel ne zeuas ket da Halgala, hag ar bobl a bellae dioutañ.

9. Ha Saul a lavaras : Degasit din ar sakrifis-losk hag ar viktimou a beoh. Hag eñ a ginnigas ar sakrifis-losk.

10. Hag goude m'en-doe kinniget ar sakrifis, setu e teuas Samuel : ha Saul a yeas war e arbenn evid e zaludi.

11. Ha Samuel a lavaras dezañ : Petra eh-eus-te greet ? Ha Saul a lavaras : O veza ma em-esu gwelet penaoz ar bobl a bellae diouzin, ha ne oas ket deuet en deiz ez-poa lavaret, ha ma oa en em zastumet ar Filinistined e Mac'hmas ;

12. Em-eus lavaret : Bremañ ar Filinistined a ziskenno etrezeg ennon e Galgala, ha n'em-eus ket bet c'hoaz trugarez an Aotrou. O veza ma oa red din, em-eus kinniegt ar sakrifis-losk.

13. Ha Samuel a lavaras da Zaul : Diskiant e oas pa eh-eus e hreet, ha n'eh-eus ket miret ar gourhemenn en-doa roet dit an Aotrou, da Zoue. Ma n'az-pije ket greet an droug-se, an Aotrou en-divije bremañ kreñveet da viken da garg a roue war Izrael.

14. Hogen da garg a roue ne bado ket en amzer da zond. An Aotrou en-deus klasket evitañ eun den hervez e galon ; hag an Aotrou en-deus gourhemennet dezañ dond da rener war e bobl, o veza n'eh-eus ket miret ar pez en-doa gourhemennet an Aotrou.

15. Neuze Samuel a zavas hag a bignas euz a Halgala da Habaa Benjamin. Hag ar re all euz ar bobl o vond war-lerh Saul a-eneb ar re a zeue da stourmi outo, a bignas ivez euz a Halgala da Habaa, war grehenn Benjamin. Ha Saul a niveras e bobl, hag a gavas gantañ war-dro c'hweh-kant den.

16. Ha Saul ha Jonatas e vab, hag ar bobl a oa ganto, a oa e Gabaa Benjamin : hag ar Filinistined o-doa diazezet o hamp e Mac'hmas.

17. Dond a reas neuze er-mêz euz a gamp ar Filinistined teir bandenn evid preiza. Eur vandenn a gerzas dre hent Efra, war-zu bro Saul ;

18. Eur vandenn all a yeas dre hent Bet-horon, hag an drede vandenn a droas etrezeg an hent euz a harzou krehenn Seboim, rag-eneb d'an distro.

19. Hogen n'en em gave gov ebed e oll vro Izrael : rag ar Filinistined o-doa miret ouz kement-se, gand aon na raje an Hebreed klezeier ha goafiou.

20. Red e oa eta da oll Izrael diskenni da gavoud ar Filinistined evid lemma o zohiou, hag o figellou, hag o bouhilli, hag o gwignedou.

21. Rag-se lemm ar zohiou, hag ar pigellou, hag ar ferhier, hag ar bouhilli a oa divouedet o broudou, heb na oant evid o gwellaad.

22. Ha pa oe deiz an emgann, n'en em gavas na kleze na goaf e dorn hini ebed euz ar re a oa gand Saul ha Jonatas, nemed gand Saul hepken ha Jonatas, e vab.

23. Hogen gward ar Filinistined a zeuas er-mêz euz a Vac'hmas.

XIV. Pennad.

Jonatas a zo treh d'ar Filinistined.

1. C'hoarvezoud a reas eun deiz penaoz Jonatas, mab Saul,, a lavaras da eun den yaouank, e floh : Deus, ha deom etrezeg gward ar Filinistined, a zo en tu-hont : hogen ne lavaras ket kement-se d'e dad.

2. Hogen Saul a chome er penn pella euz a Habaa dindan eur wezenn hreunad a oe e Magron : hag ar bobl a oa gantañ a oa war-dro c'hweh-kant den.

3. Hag Ac'hlas, mab Ac'hitob, breur Ic'habod, mab Fineez, mab Heli beleg-braz an Aotrou e Silo, a zouge an efod. Ha ne ouie ket ar bobl peleh e oa eet Jonatas.

4. Hogen el leh dre behini e poanie Jonatas da bigna evid tremenoud etrezeg gward ar Filinistined, ez oa diou roh a bep tu uhel-braz ha garo an eil hag eben, ha begeg e doare dent : hag unan anezo a oa anvet Bosez, hag eben Sene.

5. Unan euz ar reier a oa troet war-zu an hanternoz rag eneb da Vac'hmas, hag eben war-zu ar hreisteiz rag eneb da Habaa.
6. Hogen Jonatas a lavaras d'an den yaouank, e floh : Deus ha tremenom beteg gward ar re ziemwaded-se : marteze e stourmo an Aotrou evidom : rag n'eo ket diêz d'an Aotrou trehi gand kalz pe gand nebeud.
7. Hag e floh a lavaras dezañ : Gra ar pezh a blijo d'az kalon : kee el leh ma kiri, ha me az heulio e peb leh.
8. Ha Jonatas a lavaras : Setu ez eom etrezeg an dud-se. Ha pa vezim bet gwelet ganto,
9. Ma leveront deom evel-henn : chomit ken n'az aim d'ho kavoud ; chomom el leh m'emaom, ha na bignom ket etrezeg enno.
10. Hogen ma leveront : Pignit etrezeg ennom ; pignom, rag an Aotrou en-devezo o lakaet etre on daouarn : honnez a vezo an arouez deom.
11. En em ziskouezjont a rejont eta o-daou da ward ar Filinistined ; hag ar Filinistined a lavaras : Setu an Hebreed a zeu er-mêz euz ar heviou e pere e oant da guza.
12. Ha tud ar ward a gomzas ouz Jonatas hag ouz e floh, hag a lavaras : Pignit etrezeg ennom, hag e tiskouezim deoh eun dra. Ha Jonatas a lavaras d'e floh : Pignom, deus war va lerh : rag an Aotrou en-deus o lakaet etre daouarn Izrael.
13. Jonatas a bignas eta o krapa gand e zaouarn ha gand e dreid, hag e floh war e lerh. Evel-se lod a gouezas dirag Jonatas, hag a e floh a zeue war e lerh a laze ar re all.
14. Henez a oa ar henta gouli, e pehini Joanats hag e floh a lazaz war-dro ugent den, war eun dachenn zouar na oa ket ledannoh eged an hanter euz a eur park a zo daou ejenn evid arad en eun devez.
15. Hag eur burzud a hoarvezas er hamp ha war ar mêz : hag ar re oll euz ar gward a oa eet da breiza, a oe spontet-braz, hag ar vro a oe keflusket : hag e c'hoarvezas evel eur burzud a-berz Doue.
16. Evezidi Saul, pere a oa e Gabaa Benjamin, a zellas hag a welas eul lod braz a dud gourvezet, ha lod all a dehe tu-mañ ha tu-hont.
17. Ha Saul a lavaras d'ar re a oa gantañ : Klaskit ha gwelit piou a zo eet kuit diouzom. Ha pa oe greet an enklask, e oe kavet penaoz Jonatas hag e floh ne oant ket eno.
18. Ha Saul a lavaras da Akias : Tosta ouz arh Doue (rag arh Doue a oa eno neuze gand bugale Izrael).
19. Hag endra ma komze Saul ouz ar beleg, e savas eur savar braz e kamp ar Filinistined : kreski a ree a-nebeud e-nebeud, hag her hlever skiltroh. Ha Saul a lavaras d'ar beleg : Tenn da zorn ganez.
20. Ha Saul hag an oll bobl a oa gantañ en em lakaas da harmi hag ez ejont beteg leh an emgann : ha setu kleze pep hini a oa troet ouz e nesa, ha braz e oe al lazerez.
21. An Hebreed ivez pere a oa gand ar Filinistined abaoe nebeud hag o-doa pignet d'o hamp, a zistroas da gavoud an Izraelited a oa gand Saul ha Jonatas.
22. An oll Izraelited ivez, pere a oa en em guzet e menez Efraim, o klevoud penaoz e tehe ar Filinistined en em zastumas gand o zud evid stourmi. Ha Saul en-doa gantañ war-dro deg-mil den.
23. Hag an Aotrou a ziboanias Izrael en deiz-se ; hag an emgann a yeas beteg Bethaven.
24. Hga an Izraelited en em zastumas en deiz-se. Hogen Saul a douas evel-henn e ano ar bobl : Milliget ra vezo an den a zebro boued a-barz ar pardaez, ken na vezin en em veñjet euz va enebourien. Ha den ebed ne zebras boued.
25. Neuze e teujont oll en eur hoad, e pehini edo mel war horre an douar.

26. Ha pa oe eet ar bobl er hoad, e welas ar mel o tivera ; hogen den ne gasas e zorn d'e henou ; rag ar bobl en-doa aon rag al le.

27. Hogen Jonatas n'en-doa ket klevet e dad o toui e ano ar bobl : hag eñ a astennas penn eur wialenn a oa en e zorn, hag a zoubas anezi en eun direnn vel : hag o veza troet e zorn ouz e henou, e zaoulagad a sklêrraas.

28. Hag unan euz ar bobl a lavaras dezañ : Da dad en-deus gouestlet ar bobl dre le, o lavaroud : Milliget ra vezo an den a zebro boued hirio. (Hogen ar bobl a oa gweñvet).

29. Ha Jonatas a lavaras : Va zad en-deus keflusket ar vro : gwelet hoh-eus hoh-unan penaoz eo bet sklêrreet va daoulagad, o veza ma em-eus tañvaet eun nebeud euz ar mel-ze.

30. Pegement e vije en em greñveet muioh ar bobl, ma he-divije debret euz ar pez he-deus kavet e preiz e enebourien ? Ha ne ve ket brasoh gouli ar Filinistined ?

31. Hag i a drehas ar Filinistined en deiz-se adaleg Mac'hmas beteg Ajalon. Hogen ar bobl a oa skuiz-braz :

32. Hag eñ en em daolas war ar preiz, a gemeras deñved, hag ejenned, ha leueou, hag a lazas anezo war an douar : hag ar bobl o debras gand ar gwad.

33. Hogen danevellet e oe kement-se da Zaul, o lavaroud penaoz ar bobl he-doa pehet a-eneb an Aotrou, o tebri kig gand ar gwad. Hag eñ a lavaras : Torret eo bet al lezenn ganeoh : ruillit amañ bremañ eur mên braz.

34. Ha Saul a lavaras c'hoaz : It e-touez ar bobl ha livirit dezo, ma tegaso pep hini e ejenn hag e dourh ; ha lazit o amañ ha debrit, ha ne behot ket a-eneb an Aotrou o tebri kig gand ar gwad. Hag ar bobl oll a zegasas pep hini e ejenn gand an dorn beteg an noz ; hag i o lazas eno.

35. Neuze Saul a zavas eun aoter d'an Aotrou ; hag hounnez eo ar genta aoter en-deus savet d'an Aotrou :

36. Ha Saul a lavaras : En em strinkom henoz war ar Filinisted, ha dispennom anezo ken na houlaouo an deiz, ha na lezom hini anezo. Hag ar bobl a lavaras : Gra ar pez a gavi mad da ober. Hag ar beleg a lavaras : Tostaom amañ ouz Doue.

37. Ha Saul a houlennas kuzul digand an Aotrou : Ha mond a rin-me war-lerh ar Filinisted ? Hag o lakaad a ri-te etre daouarn Izrael ? Ha ne responte ket dezañ en deiz-se.

38. Ha Saul a lavaras : Tostait amañ, oll bennou braz ar bobl ; ha gouezit, ha gwelit dre biou eo deuet ar pehed-se hirio.

39. Rag evel ma eo beo an Aotrou, salver Izrael, pa ve bet greet gand Jonatas va mab, heb distaol e varvo. Hag hini euz ar bobl ne zislavaras anezañ war kement-se.

40. Hag eñ a lavaras da oll Izrael : En em likit oll en eun tu, ha me gand Johanas, va mab, en em likiin en tu all. Hag ar bobl a lavaras da Zaul : Gra evel ma kavi mad da ober.

41. Ha Saul a lavaras d'an Aotrou, Doue Izrael : Aotrou, Doue Izrael, ro da anaoud deom perag n'eh-eus ket respontet hirio d'az servijer ? Mar dema ar fallagriez-se ennon pe e Jonatas, va mab, diskouez hi ; mar dema ar fallagriez-se en da bobl, santella hi ; hag e kouezas war Jonatas ha Saul. Hag ar bobl a oe kuit.

42. Ha Saul a lavaras : Toalit ar sort etre me ha Jonatas, va mab ; hag e kouezas war Jonatas.

43. Hogen Saul a lavaras da Jonatas : Ro da anaoud din petra eh-eus greet. Ha Jonatas he roas da anaoud dezañ, o lavaroud : Tañveet em-eus eun nebeud mel war penn ar wialenn a oa em dorn, ha setu e varvin.

44. Ha Saul a lavaras : Ra ray Doue kement-se ha c'hoaz ouspenn, ma na varves, Jonatas.

45. Hag ar bobl a lavaras da Zaul : Ha mervel a rafe Jonatas, goude ma en-deus greet eun dra ken braz en Izrael ? Ne hoarvezo ket kement-se : Evel ma eo beo an Aotrou, ne gouezo ket eur vlevenn euz e benn d'an douar, rag gand Doue en-deus labouret hirio. Ar bobl eta a ziboanias Jonatas, hag a viras na oe lazec.

46. Neuze Saul a yeas kuit, heb mond mui war-lerh ar Filinistined ; hag ar Filinistined a zistroas d'o bro.

47. Ha Saul goude beza kreñvaet e garg a roue war Izrael ; a stourmas tro-war-dro a-eneb e oll enebourien, a-eneb Moab, hag a-eneb mibien Ammon, hag a-eneb Edom, hag a-eneb roueed Soba, hag a-eneb ar Filinistined : hag e pe tu bennag e troe, e oa an treh gantañ.

48. Hag o veza strollet e arme, e trehas Amalek, hag e tennas Izrael euz a zaouarn e wasterien.

49. Hogen Saul en-doe tri mab, Jonatas, ha Jessui, ha Melkisia ; ha diou verh, a bere an hena a oa anvet Merob hag ar yaouanka Michol.

50. Hag ano gwreg Saul a oa Akinoam, merh Akimaas, hag ano penn e arme Abner, mab Ner, contr Saul a-berz tad :

51. Rag Kis a oe tad Saul, ha Ner tad Abner, mab Abiel.

52. Hogen kaled e oe ar brezel a-eneb ar Filinistined e oll zeiziou Saul. Ha kerkent ha ma wele Saul eun den kreñv ha mad evid ar brezel, e kemere anezañ gantañ.

XV. Pennad.

Saul o tizenti oh Doue a espern Roue an Amalekited.

1. Ha Samuel a lavaras da Zaul : Va degaset en-deus an Aotrou, evid da eoulia da Roue war va fobl a Izrael. Selaou eta bremañ mouez an Aotrou.

2. Setu petra a gont Aotrou an armeou : Deuet eo lavar din²⁹⁰ euz ar pez en-deus greet Amalek da Izrael, e pe zoare eo en em enebet outañ en hent pa bigne euz an Ejipt.

3. Hogen bremañ kee, ha dispenn Amelek, ha dismantr kement a zo dezañ : n'az-peuz neb trugarez evitañ ha na hoanta netra euz a gement a zo dezañ ; hogen laz oll, adaleg ar gwaz beteg ar vaouez, ar bugel bihan, hag an hini ouz ar vronn, an ejenn hag an dañvad, ar hañval hag an azen.

4. Saul a roas e hourhemennou d'ar bobl, hag eñ a niveras anezo evel ein, daouhant mil den war droad, ha deg mil euz a dud Juda.

5. Ha pa oe deuet Saul beteg kêr Amalek, e stegnas spiou er froud.

6. Ha Saul a lavaras d'ar Sineed : Kerzit, it kuit, ha diskennit euz a-douez an Amalekited gand aon na strobfen ahanoh ganto ; rag c'hwi hoh-eus greet trugarez e-keñver oll vugale Izrael pa bignent euz an Ejipt. Hag ar Sineed en em dennas euz a-douez an Amalekited.

7. Ha Saul a drehas an Amalekited, adaleg Hevita beteg an hent a ya da Zur, a zo rag-eneb d'an Ejipt.

8. Hag eñ a gemeras Agag, roue an Amalekited ez-veo, hag a lazas an oll bobl gand ar hleze.

9. Hogen Saul hag ar bobl a espernas Agag, hag ar pez a oa gwella en deñved, hag en ejenned, hag en tourhed, hag en dillad, hag e kement a oa kaer : ha ne fellas ket dezo o bevezi : hogen kement a oa astud ha displed a oe kaset da get ganto.

²⁹⁰ Deuet eo lavar din : sonnig am-eus euz...

10. Hogen an Aotrou a gomzas ouz Samuel, o lavaroud :
11. Keuz em-eus da veza lakaet Saul da roue, o veza ma en-deus va dilezet, ha n'en-deus ket sevenet va homziou. Ha Samuel a oe glaharet, hag e harmas ouz an Aotrou 'hed an noz.
12. Ha pa zavas Samuel kent an deiz evid mond da gavoud Saul dioh ar mintin, e oe lavaret dezañ penaoz e oa deuet Saul war ar Harmel hag en-doa savet evitañ eun nor a enor, hag o veza deuet ahano, e oa diskennet da Halgala. Samuel eta a yeas da gavoud Saul ; ha Saul a ginnige d'an Aotrou eur sakrifis-losk, euz a breveudiou ar preiz en-doa kemeret war Amalek.
13. Ha pa oa deuet Samuel etrezeg Saul, e lavaras Saul dezañ : Benniget ra vezi gand an Aotrou. Me em-eus sevenet ger an Aotrou.
14. Ha Samuel a lavaras : Petra eo eta ar begierez deñved-se a zeu ouz va diskouarn, hag ar blejerez ejenned a glevan ?
15. Ha Saul a lavaras : Euz a Amelek int bet degaset ; rag ar bobl he-deus espernet ar pez a oa a wella en deñved hag en ejenned, evid o hinniga d'an Aotrou, da Zoue, e skarifis ; rag ar re all a zo bet lazet ganeom.
16. Hogen Samuel a lavaras da Zaul : Kav e mad, hag e roin da anaoud dit ar pez en-deus lavaret din an Aotrou en noz-mañ. Komz, eme Saul.
17. Ha Samuel a lavaras : Pa oas bihanig dirag da zaoulagad da-unan, ha n'out ket bet lakaet da benn war breuriezou Izrael ? Hag an Aotrou en-deus da eouliet da roue war Izrael.
18. Hag an Aotrou en-deus da gaset en hent hag en-deus lavaret : Kee ha laz ar beherien, an Amalekited : ha stourm outo ken ne vezint lazet oll.
19. Perag eta n'eh-eus ket te selaouet mouez an Aotrou, hag out en em droet ouz ar preiz, hag eh-eus greet an droug dirag daoulagad an Aotrou ?
20. Ha Saul a lavaras da Zamuel : En eneb, selaouet em-eus mouez an Aotrou, ha baleet em-eus en hent dre behini en-deus va haset an Aotrou : degaset em-eus Agag, roue Amalek, hag an Amalekited em-eus lazet.
21. Hogen ar boibl he-deus kemeret euz ar preiz deñved hag ejenned, evel ar preveudi euz ar re a zo bet lazet, evid o gouestla d'an Aotrou, he Doue, e Galgala.
22. Ha Samuel a lavaras : Ha sakrifisou-losk, ha viktimou eo a houlen an Aotrou ? ; ha ne houlen ket kentoh e ve sentet ouz e vouez ? Rag gwelloc'h eo ar zentidigez eged ar viktimou : ha brasoh eo sealou eged kinniga eun tourh lard.
23. Rag evel eur pehed a zorseraj²⁹¹ eo beza amzent ; hag evel an droug a idolatri eo enebi ouz e hrad. O veza eta ma eh-eus distaolet ger an Aotrou, an Aotrou en-deus da zistaolet evid na vezi ket roue.
24. Ha Saul a lavaras da Zamuel : Pehet em-eus o veza ma em-eus torret ger an Aotrou ha da heriou-te, gand aon rag ar bobl hag evid senti ouz he mouez.
25. Hogen bremañ doug va fehed, me az ped, ha distro ganen, evid ma azeulin an Aotrou.
26. Ha Samuel a lavaras da Zaul : Ne zistroin ket ganez, o veza ma eh-eus distaolet ger an Aotrou, ha ma en-deus an Aotrou da zistaolet evid na vezi ket roue war Izrael.
27. Ha Samuel a zistroas evid mond kuit ; hogen Saul a gemeras anezañ dre gorn e vantell pehini a oe roget.
28. Ha Samuel a lavaras dezañ : An Aotrou en-deus roget hirio rouantelez Izrael diouzit, hag he roet en-deus d'an nesa, gwelloc'h egedout.
29. Hogen an hini 'zo treh en Izrael ne esperno ket ha ne vezo ket tenerraet gand ar heuz : rag n'eo ket eun den evid kaoud keuz.

²⁹¹ a zorseraj : a zorserez.

30. Ha Saul a lavaras : Pehet em-eus : hogen bremañ enor ahanon dirag va fobl ha dirag Izrael, ha distro ganen, evid ma azeulin an Aotrou, da Zoue.

31. Samuel eta a zistroas hag a heulias Saul : ha Saul a azeulas an Aotrou.

32. Ha Samuel a lavaras : Degaset din Agag, roue Amalek. Ha degaset e oe dezañ Agag hag eñ lard-braz, hag o krena. Hag Agag a lavaras : Hag eur maro c’hwerro am distago dioh pep tra ?

33. Ha Samuel a lavaras : Evel ma en-deus da gleze lakaet gwragez divugale²⁹², evel-se da vamm a vezo divugale e-touez ar gwragez. Ha Samuel a drohas anezañ a-dammou dirag an Aotrou e Galgala.

34. Neuze Samuel a zistroas da Ramata : ha Saul a bignas d’e di e Gabaa.

35. Ha Samuel ne welas mui Saul beteg deiz e varo. Koulskoude Samuel a skuillas daerou war Saul, o veza ma oa deuet keuz d’an Aotrou da veza e lakaet da roue war Izrael.

XVI. Pennad.

David eouliet da roue gand Samuel.

1. Hag an Aotrou a lavaras da Zamuel : Beteg pegeid e skuilli-te daerou war Saul, pa em-eus e zistaolet evid na reno mui war Izrael ? Karg da gorn a eoul, ha deus, evid ma’z kasin da Isai ar Betlehemit ; rag e-touez e vibien em-eus dilennet din eur roue.

2. Ha Samuel a lavaras : Penaoz ez in-me ? Rag Saul a glevo kement-se hag a lazo ahanon. Hag an Aotrou a lavaras : Kemer eul leue euz an tropell ganez, ha lavar : Evid ober eur sakrifis d’an Aotrou on deuet.

3. Ha galv Isai d’ar sakrifis, ha me a ziskouezo dit ar pezh az-pezo da ober : ha te a eoulio an hini a ziskouezin dit.

4. Samuell a reas eta evel m’en-doa lavaret an Aotrou dezañ. Dond a reas da Vetlehem, hag an henaoured kêr a oe souezet ; mond a rejont war e arbenn hag e leverjont : Ha dond a rez da zegas ar peoh deom ?

5. Hag eñ a lavaras : Ar peoh a zegasan : evid ober eur sakrifis d’an Aotrou on deuet ; en em zantellait, ha deuit ganen, evid ma rin ar sakrifis. Hag eñ a zantellaas Isai hag e vibien, hag o galvas d’ar sakrifis.

6. Ha pa oent deuet e-barz, e welas Eliab, hag e lavaras : Ha dirag an Aotrou ema e eouliet²⁹³ ?

7. Hag an Aotrou a lavaras da Zamuel : Na zell ket piou eo da weloud, na pegen uhel eo e vent, o veza ma em-eus e zistaolet, ha na varnan ket dioh gwel an den : rag an den a zell ouz ar pezh a weler ; hogen an Aotrou a zell ouz ar galon.

8. Hag Isai a halvas Abinadab hag a zegasas anezañ dirag Samuel. Ha Samuel a lavaras : N’eo ket hennez kemnebeud en-deus dilennet an Aotrou.

9. Hag Isai a zegasas Samma ; ha Samuel a lavaras diwar e benn : N’en-deus ket kemnebeud an Aotrou dilennet hennez.

10. Isai a zegas eta e zeiz mab dirag Samuel ; ha Samuel a lavaras dezañ : N’en-deus dilennet an Aotrou hini euz ar re-ze.

11. Ha Samuel a lavaras da Isai : Hag ar re-ze eo da oll vibien ? Hag eñ a lavaras : Unan bihan a chom c’hoaz, hag ema-eñ o peuri an deñved. Ha Samuel a lavaras da Isai : Kas d’e gerhoud : rag ne azezim ket ouz taol ken na vezo deuet amañ.

²⁹² lakaet gwragez divugale : lakaet divugale gwragez ‘zo.

²⁹³ e eouliet : an hini a zo bet eouliet gand an Aotrou.

12. Kas a reas eta, hag e oe degaset di. Hogen ruspin e oa, a zoare kaer ha koant da weloud. Hag an Aotrou a lavaras : Sao, eoul anezañ : rag hennez eo.

13. Samuel a gemeras eta ar horn eoul hag a eoulias anezañ e-kreiz e vreudeur : ha spered an Aotrou a zeuas war David en deiz-se, hag a chomas abaoe. Ha Samuel a zavas hag a yeas da Ramata.

14. Hogen spered an Aotrou a yeas kuit dioc Saul, hag eur spered droug kaset gand an Aotrou a gefluske ennañ.

15. Ha servijerien Saul a lavaras dezañ : Setu ar spered droug kaset gand an Aotrou a geflusk ahanout.

16. Mar kav mad on aotrou, e zervijerien a zo war-dro dezañ, a gerho eun den a ouezo seni gand an delenn, evid, pa grogo ennout ar spered droug kaset gand an Aotrou, ma sono gand e zorn, ha ma en em gavi gwelloc'h.

17. Ha Saul a lavaras d'e zervijerien : Klaskit eta din eur re hag a ouezo seni ervad gand an delenn, ha degasit eñ din.

18. Hag unan euz ar baotred a lavaras : Setu em-eus gwelet mab Isai, ar Betleheimit, a oar seni gand an delenn, a zo eun den kreñv-braz, den a vrezel, fur en e gomziou, ha den kaer : hag an Aotrou a zo gantañ.

19. Saul a gasas eta kannaded da Isai evid lavaroud dezañ : Kas din da vab David a zo er peurvan.

20. Isai a gemeras eta eun azen war pehini e lakaas bara hag eur podad gwin hag eur menn-gavr, hag o hasas da Zaul dre zorn David, e vab.

21. Ha David o veza deuet da gavoud Saul, a chomas en e zav dirazañ. Ha Saul a garas anezañ kalz hag hel lakaas da floh dezañ.

22. Ha Saul a gasas da lavaroud da Isai : Ra chomo David dirazon ; rag kavet en-deus gras dirag va daoulagad.

23. Evel-se bewech ma kroge e Saul ar spered droug kaset gand an Aotrou, David a gemere e delenn, hag a zone warnezi gand e zaouarn, ha Saul a oa frealzet, hag en em gave gwelloc'h : rag ar spered droug a dehe dioutañ.

XVII. Pennad.

David a laz Goliath gand eun taol batalm.

1. Hogen ar Filinistined a veza dastumet o armeou evid ar brezel, en em strollas e Soko-Juda, hag a stegnas o hamp etre Soko hag Azeka, war harzou Dommim.

2. Saul ivez ha bugale Izrael o veza en em zastumet, a zeuas da draonienn an Terebignt hag a reizas o arme evid stourmi ouz ar Filinistined.

3. Hag ar Filinistined a oa war eur menez en eun tu, hag Izrael a oa war eur menez en eun tu all : hag eun draonienn a oa etrezo.

4. Hag eun den a oa bastard a zeuas er-mêz euz a gamp ar Filinistined : Goliath a reed anezañ ; euz a Het e oa ha c'hweh ilinad hag eur rahouenn a-hed en-doa.

5. Eun tog-arem en-doa war e benn, ha gand eun harnez stankennet e oa gwisket : hag e harnez a boueze pemp mil sikl arem.

6. Morzedennou²⁹⁴ arem en-doa war e zivesker ; hag eun direnn arem a holoe e ziskoaz.

7. Fust e hoaf a oa evel karvan ar wiaderien : hag houarn e hoaf a boueze c'hweh-kant sikl houarn : hag e floh a yee en a-raog.

²⁹⁴ Morzedennou : harnez-brezel war e zivored.

8. Hga eñ a zavas hag a harmas ouz bandennou arme Izrael, hag a lavaras dezo : Perag oh-hu deuet evid en em ganna ? Ha n'on ket me eur Filistin, ha c'hwi servijerien Saul ? Dilennit eun den ahanoh, ha diskennet e-unan d'en em ganna ouzin.

9. Mar gell stourmi ouzin ha ma laz ahanon, e vezim sklaved deoh : hogen mar bezan treh dezañ ha ma lazan anezañ, c'hwi a vezo sklaved deom hag e servijot ahanom.

10. Hag ar Filistin a lavare : Daeet em-eus hirio oll arme Izrael : Roit eun den din, ha deuet e-unan d'en em ganna ouzin.

11. Hogen pa glevas Saul hag an oll Izraelited ar Filistin o komza en doare-ze, e oent souezet ha spontet-braz.

12. Hogen David a oa mab d'an den-ze euz a Efrata, a behini on-eus komzet kent, euz a Vetlehem-Juda, hag a oa anvet Isai, pehini en-doa eiz mab hag a oa ar hosa e-touez an dud e deziou Saul.

13. E dri mab hena a oa eet war-lerh Saul d'ar brezel : hag anoiou an tri mab dezañ pere a oa eet d'ar brezel, a oa Eliab an hena, Abinadab an eil, ha Samma an trede.

14. Hogen David a oa ar yaouanka. An tri hosa o veza eta heuliet Saul,

15. David a oa eet kuit dioh Saul evid mond da beuri tropellou e dad e Betlehem.

16. Koulskoude ar Filistin en em ziskoueze dioh ar mintin ha dioh ar pardaez, hag a reas evel-se e-pad daou-ugent devez.

17. Hogen Isai a lavaras da Zavid e vab : Kemer evid da vreudeur eun efi²⁹⁵ bleud heiz, hag an deg torz-bara-mañ, ha red etrezeg da vreudeur d'ar hamp.

18. Doug ivez an deg fourmach-mañ d'ar Milener : gwel ha da vreudeur a zo yah ha goulenn gand piou o-deus-i darempred.

19. Hogen Saul hag ar re-mañ hag oll dud Izrael a stourme ouz ar Filinisted e traonienn an Terebignt.

20. David eta a zavas dioh ar mintin hag a roas da eun den ar garg euz e dropellou, hag ez eas kuit goude beza kemeret gantañ ar pezh en-doa lavaret Isai. Hag eñ a zeuas d'al leh anvet Magala ha d'an arme, pehini a dostae evid an emgann gand garmou braz.

21. Rag Izrael en-doa reizet e arme, hag ar Filinisted en tu all a oa dare d'an emgann.

22. Hogen David o veza lezet kement en-doa kaset gantañ etre daouarn an hini a ziwalle ar pakadou, a redas etrezeg leh an emgann, hag a houlennas ma²⁹⁶ oa mad an doare gand e vreudeur.

23. Ha pa gomze c'hoaz outo, ar Filistin bastard-se euz a Het, anvet Goliath, a zeuas er-mêz euz a gamp ar Filinisted ; ha David e glevas o lavaroud an heveleb komziou.

24. Hogen an Izraelited oll, pa weljont an den-ze, a dehas dirazañ hag a oe spontet-braz.

25. Hag unan euz a dud Izrael a lavaras : Ha ne welit-hu ket an den-ze a bign aze ? Evid daela Izrael e pign. An den a lazo anezañ a vezo karget a vadou gand ar roue : e verh a roio dezañ, ha ti e dad a vezo kuit da bae tellou en Izrael.

26. Ha David a lavaras d'ar re a oa en e gichenn : Petra a vezo roet d'an hini a lazo ar Filistin-ze hag a lamo an dismegañs euz a Izrael ? Rag piou eo ar Filistin diemwadet-se, pehini a zeu da zaea armeou an Doue beo ?

27. Hag ar bobl a gomze outañ en heveleb doare, o lavaroud : Kement-mañ a vezo roet d'an hini hel lazo.

28. Hogen Eliab e vreur hena, o veza e glevet o komz evel-se gand re all, a zavas droug ennañ ouz David hag a lavaras : Perag out-re deuet amañ ha perag eh-eus-te

²⁹⁵ efi : ?

²⁹⁶ ma : hag eñ e oa

dilezet on nebeud deñved en distro ? Me a anavez da rogoni ha drougiez da galon, ha penaoz n'out diskennet amañ nemed evid gweloud an emgann.

29. Ha David a lavaras : Petra em-eus-me greet ? Ha ne hellan-me komza ?

30. Hag eñ a zistroas eun nebeud dioutañ evid mond etrezeg eun all, hag a lavaras an heveleb komziou ; hag ar bobl a lavaras dezañ evel kent.

31. Hogen ar pezh a lavare David o veza bet klevet, a oe lavaret dirag Saul.

32. Hag o veza bet kaset dirazañ, e lavaras David dezañ : Ne vezet spontet kalon hini ebed en abeg da hennez : me, da zervijer, a yelo hag a stourmo ouz ar Filistin-ze.

33. Ha Saul a lavaras da Zavid : Ne helli ket enebi ouz ar Filistin-ze na stourmi outañ ; rag re yaouank out, hag eun den a vrezel eo eñ abaoe e yaouankiz.

34. Ha David a lavaras da Zaul : Pa ziwallo da zervijer tropell e dad, e teue eul leon pe eun ourz hag a skrape eun tourh euz a greiz an tropell.

35. Ha me a yee war o lerh, a skoe ganto hag a denne an tourh euz o genou : ha pa zavent ouzin, me a groge en o gouzoug, a vouge anezo hag o laze.

36. Evel-se me, da zervijer, em-eus lazet eul leon hag eun ourz ; hag ar Filistin diemwadet-se a vezo evel unan anezo. Bremañ ez in hag e lamin an dismegañs euz a-douez ar bobl : rag piou eo ar Filistin diemwadet-se pehini a gred dond da villiga arme an Doue beo ?

37. Ha David a lavaras : An Aotrou pehini en-deus va zennet euz a grabanou al leon hag euz baviou an ourz, am zenno ivez euz a zaouarn ar Filistin-ze. Neuze Saul a lavaras da Zavid : Kee, ha ra vezo an Aotrou ganez.

38. Ha Saul a wiskas da Zavid e zillad e-unan hag a lakaas war e benn eun tog arem, hag a wiskas dezañ eun hobregon.

39. Ha David o veza gourizet eur hleze war e zae, a fellas dezañ gweloud ha ma hellje kerzoud gand e armou ; rag ne oa ket boazet diouto. Ha David a lavaras da Zaul : N'hellan ket kerzoud evel-se ; rag n'on ket boazet d'e ober. Ha David e zennas²⁹⁷.

40. Hag eñ a gemeras e vaz, en-doa bepred en e zorn : hag e kemeras evitañ pemp mên kompez euz ar froud, a lakaas en e zah bara a oa gantañ : eur vatalm a gemeras en e zorn hag e kerzas ouz ar Filistin.

41. Hogen ar Filistin a gerzas ivez hag a dostaas ouz David ; hag e floh a oa en e raog.

42. Ha pa zellas ar Filistin war e dro, ha pa welas David, e tisprizas anezañ, rag eun den yaouank 'oa, hag eñ ruspinn, hag a zoare kaer.

43. Hag ar Filistin a lavaras da Zavid : Hag eur hi on-me evid ma teufes ouzin gand eur vaz ? Hag ar Filistin a villigas David dre e zoueed.

44. Hag eñ a lavaras da Zavid : Deus etrezeg ennon ha me a roy da gig da evned an neñv ha da loened an douar.

45. Hogen David a lavaras d'ar Filistin : Te a zeu ouzin gand ar hleze, hag ar goaf, hag an direnn ; ha me a zeu ouzit e ano Aotrou an armeou, Doue bandennou Izrael, pere eh-eus daelet.

46. Hirio an Aotrou az lakay etre va daouarn ; da laza a rin hag e trohin da benn diouzit : hag hirio e roin korviou maro kamp ar Filistined da evned an neñv ha da loened an douar, evid ma ouezo an oll zouar penaoz ez eus eun Doue en Izrael.

47. Hag an oll strollad tud-se a anavezo penaoz n'eo ket gand ar hleze, na gand ar goaf e tiboan an Aotrou : rag en e halloud ema ar brezel ; hag eñ eo a lakay ahanoh etre on daouarn.

²⁹⁷ David e zennas : tenna a reas e armou hag e hobregon.

48. Pa zavas eta ar Filistin, pa zeuas ha pa dostaas ouz David, eh hastas David hag e redas evid stourmi ouz ar Filistin.

49. Hag eñ a lakaas e zorn er zah, a gemeras eur mên, a droas anezañ gand e vatalm hag e daolas e-kreiz tal ar Filistin ; hag ar mên a yeas don en e dal, hag eñ a gouezas war e henou d'an douar.

50. Evel-se David a drehas ar Filistin gand eur vatalm hag eur mên ; ha goude beza e ziskaret, hel lazas. Hag o veza n'en-doa ket a gleze en e zorn,

51. E redas David hag e savas war ar Filistin ; hag e kemeras e gleze, hag e tennas anezañ euz e houin ; hag e lazas anezañ o troha e benn dezañ. Hogen pa welas ar Filistined penaoz e oa maro ar hreñva anezo, e tehjont.

52. Ha tud Izrael ha Juda a zavas en eur harmi hag a yeas war-lerh ar Filistined beteg an draonienn ha beteg porz Akkaron : ha kalz euz ar Filistined a oe gloazet e hent Saraim, beteg Get hag Akkaron.

53. Ha bugale Izrael o tistrei goude beza eet war-lerh ar Filistined, a wastas o hamp.

54. Hogen David a gemeras penn ar Filistin hag e zougas da Jeruzalem : hogen e armou a lakaas en e delt.

55. Ha pa welas Saul David o kerzoud ouz ar Filistin, e lavaras da Abner, priñs ar vrezelidi : Euz a be ouenn e tiskenn an den yaouank-se, Abner ? Hag Abner a lavaras : Evel ma eo beo da ene, o ! roue, n'ouzon doare.

56. Hag ar roue a lavaras : Goulenn, te, da biou eo mab an den yaouank-se.

57. Ha pa oe distroet David goude beza lazet ar Filistin, Abner a gemeras anezañ hag her hasas dirag Saul, hag eñ penn ar Filistin en e zorn.

58. Ha Saul a lavaras dezañ : A be ouenn out-te, den yaouank ? Ha David a lavaras : Me a zo mab d'az servijer Isai euz a Vetlehem.

XVIII. Pennad.

Kengarantez Jonatas ha David. David a zimez gand Michol, eil merh Saul.

1. Ha pa en-doe ehanet David komz ouz Saul, ene Jonatas en em stagas stard ouz ene David, ha Jonatas a garas anezañ evel e ene e-unan.

2. Ha Saul a zalhas anezañ en deiz-se, ha n'hel lezas ket da zistrei da di e dad.

3. Neuze David ha Jonatas a reas eur gevredigez, rag Jonatas a gare anezañ evel e ene e-unan.

4. Rag-se Jonatas a ziwiskas ar zae a oa warnezañ, hag he roas da Zavid, gand e zillad all ; ha beteg e gleze, hag e wareg, hag e houriz.

5. David a yee da gement leh ma her hase Saul, hag eñ en em rene gand furnez : ha Saul hel lakaas e penn ar vrezilidi ; hag eñ a oe degemeret mad gand an oll bobl, ha dreist-oll gand ofiserien Saul.

6. Hogen pa zistroe David, goude m'en-doe lazet ar Filistin, ar merhed a zeuas er-mêz euz a oll gêriou Izrael, o kana hag o tañsa e raog ar roue Saul, oh en em laouennaad gand taboulinou ha sistrou.

7. Hag ar merhed o vond a-raog, a gane hag a zañse, o lavaroud : Saul en-deus lazet mil, ha David deg mil.

8. Eun droug braz a zavas e Saul, hag al lavar-ze a zisplijas kalz dezañ ; hag eñ a lavaras : Deg mil o-deus roet da Zavid, ha mil o-deus roet din : petra en-deus hen da gaoud c'haoz nemed rouanetlez ?

9. A neuze ha pelloh ne zellas mui Saul ouz David a du mad.

10. Hogen antronoz ar spered droug kaset gand Doue a grogas e Saul, hag eñ a ziougane e-kreiz e di : hogen David a zone gand an delenn evel ma ree bemdez ; ha Saul pehini en-doa eur goaf en e zorn,

11. A daolas anezañ o kredi penaoz eh hellje toulla David hag ar voger : hogen David en em zistroas diou wech a-zirazañ.

12. Ha Saul en-doe aon rag David, o veza ma oa an Aotrou gand hemañ, ha ma oa en em dennet dioutañ e-unan.

13. Rag-se Saul a bellaas anezañ dioutañ ; hag a lakaas anezañ e penn mil den : hag eñ a yee hag a zeue e-raog ar bobl.

14. David ivez en em rene gand furnez en e oll heñchou, hag an Aotrou a oa gantañ.

15. Saul eta o weloud penaoz e oa fur-braz, a zeuas da lakaad evez outañ.

16. Hogen oll Izrael ha Juda a gare David ; rag eñ e oa a yee hag a zeue en o raog.

17. Ha Saul a lavaras da Zavid : Setu Merob, va merh hena ; hi eo a roin dit da wreg : bez hepken eun den kaloneg, ha stourm e brezeliou an Aotrou. Rag Saul a lavare ennañ e-unan : Na zavet ket va dorn outañ, hogen savet outañ dorn ar Filistined.

18. Ha David a lavaras da Zaul : Piou on-me, ha petra eo va buhez, pe kerentiez va zad en Izrael, evid ma teufen da vab-kaer d'ar roue.

19. Hogen en amzer ma tlee Merob, merh Saul, beza roet da Zavid, e oe roet da wreg da Hadriel Molatit.

20. Hogen Michol, eil merh Saul, a gare David. Ha kement-se o veza bet lavaret da Zaul, e oe da gantañ.

21. Ha Saul a lavaras : He rei a rin dezañ evid ma vezo hi kirieg dezañ d'en em goll, ha ma kouezo warnezañ dorn ar Filistined. Ha Saul a lavaras da Zavid : E daou dra e vezi hirio da vab-kaer din.

22. Ha Saul a roas ar gourhemenn-mañ d'e zervijerien : Komzit ouz David evel heb gouzoud din, o lovaroud : Setu eh-eus karantez ar roue, hag e oll zervijerien a gar ahanout. Bez eta bremañ da vab-kaer ar roue.

23. Ha servijerien Saul a lavaras kement-se e pleg skouarn David. Ha David a lavaras : Ha nebeud e kavit-hu beza mab-kaer d'ar roue ? Evidon-me a zo paour ha dister.

24. Ha servijerien Saul a lavaras kement-se dezañ, o lovaroud : Evel-se en-deus lavaret David.

25. Hogen Saul a lavaras : Evel-henn e leverot da Zavid : Ar roue n'en-deus ket a ezomm a argoulou ; ne houlenñ ken nemed kant pod-mezenn a Filistined, evid ma vezo veñjet ar roue euz e enebourien. Hogen Saul a venne lakaad David etre daouarn ar Filistined.

26. Ha pa o-doe e zervijerien disrevellet da Zavid ar pezh en-doa lavaret Saul, e oe da gantañ o klevoud e teuje da veza mab-kaer d'ar roue.

27. Ha nebeud deveziou goude e savas David, hag ez eas gand an dud a oa dindan e veli. Hag eñ a lazas daou-hant Filistin, hag a zegasas o fodou-mezenn, hag o niveras d'ar roue, evid beza da vab-kaer dezañ. Saul eta a roas dezañ da wreg, Michol, e verh.

28. Ha Saul a welas sklêr penaoz edo an Aotrou gand David. Ha Michol, merh Saul, a gare anezañ.

29. Ha Saul a zeuas da gaoud aon rag David muioh-mui : hag eñ a zeuas da enebour da Zavid da viken.

30. Neuze priñsed ar Filistined a zeuas ; ha kerkent ha ma teujont er-mêz, David en em renas gand mui a furnez eged oll zervijerien Saul ; hag e ano a oe brudet-braz.

XIX. Pennad.

Saul a fell dezañ laza David, pehini a ya da gavoud Samuel.

1. Hogen Saul a gomzas ouz Jonatas e vab, hag ouz e oll zervijerien evid ma lazjent David. Hogen Jonatas, mab Saul, a gare kalz David.

2. Ha Jonatas a zisklêrias kement-se da Zavid, o lavaroud : Saul, va zad, a glask an doare d'az laza : rag-se laka evez ouzit 'hed ar mintin, me az ped ; kee en eul leh distro hag en em guz eno.

3. Hogen me a yelo gand va zad er-mêz, hag a chomo em zav en e gichenn er park e pehini e vezi : ha me a gomzo ouz va zad diwar da benn ; ha kement a welin, a roin da anaoud dit.

4. Jonatas eta a gomzas ervad diwar-benn David da Zaul, e dad, hag a lavaras dezañ : Na beh ket, o ! roue, a-eneb David da zervijer ; rag n'en-deus ket pehet en da eneb, ha kement en-deus greet evidout a zo mad-meurbed.

5. Lakaet en-deus e vuhez en e zorn²⁹⁸, ha lazet en-deus ar Filistin ; hag an Aotrou en-deus greet eun dieub braz en Izrael²⁹⁹. E welet eh-eus hag out en em laouennaet. Perag eta e fell dit pehi a-eneb eur gwad dinamm, o laza David pehini a zo heb gwall ?

6. Pa glevas Saul kement-se, mouez Jonatas a habaskaas anezañ, hag eñ a douas : Evel ma eo beo an Aotrou, ne vezo ket lazet.

7. Neuze Jonatas a halvas David, hag a zanevellas dezañ an oll gomziou-ze : ha Jonatas a gasas David etrezeg Saul ; hag eñ a oe dirazañ, evel ma oa kent.

8. Hag ar brezel a zavas a-nevez : ha David a yeas er-mêz hag a stourmas ouz ar Filistined : laza a reas eul lod braz anezo, hag i a dehas a-zirazañ.

9. Ar spered droug kaset gand an Aotrou a grogas e Saul, pa oa eñ azezet en e di, hag e talhe eur goaf en e zorn. Hogen David a zone gand an delenn.

10. Ha Saul a glaskas toulla David ouz ar voger gand e hoaf ; hogen David en em zistroas a-zirazañ ; hag ar goaf, heb beza e hloazet, a skoas ouz ar voger. Ha David a dehas hag a oe dieubet en noz-se.

11. Hogen Saul a gasas e warded da di David, evid e zerhel hag e laza diouz ar mintin. Michol, e wreg, a zisklêrias kement-se da Zavid, o lavaroud : Ma ne dehez ket henoz, e varvi warhoaz.

12. Hag hi a ziskennas anezañ dre ar prenest : hag eñ a yeas kuit, hag a dehas, hag a oe saveteet.

13. Neuze Michol a gemeras eur skeudenn³⁰⁰ hag a lakaas anezi war gwele David : eur hrohenn bleveg gavr a lakaas war-dro d'he fenn hag e holoas anezi gand dillad.

14. Hogen Saul a gasas soudarded evid krapa e David. Hag e oe lavaret penaoz e oa klañv.

15. Ha Saul a gasas kannaded all evid gweloud David, o lavaroud : Degasit eñ din en e wele evid ma vezo lazet.

16. Ha pa oa deuet ar gannaded, ne oe kavet war ar gwele nemed eur skeudenn, ha krohenn eur havr war-dro d'he fenn.

17. Ha Saul a lavaras da Vichol : Perag eh-eus-te greet goap ahanon evel-se, hag eh-eus-te lakaet va enebour da dehoud ? Ha Michol a lavaras da Zaul : O veza ma en-deus lavaret din : Va lez da vond pe az lazin.

²⁹⁸ Lakaet en-deus e vuhez en e zorn : darbet eo bet beza lazet gantañ e-unan.

²⁹⁹ an Aotrou en-deus greet eun dieub braz en Izrael : an Aotrou en-deus dieubet Izrael.

³⁰⁰ eur skeudenn : eun delwenn.

18. David o tehoud evel-se, a oe saveteet hag a yeas da gavoud Samuel e Ramata hag a zanevellas dezañ kement en-doa greet Saul dezañ : ha Samuel hag eñ a yeas kuit ahano, hag e chomjont e Najot.

19. Ha lavaret e oe da Zaul : Setu ema David e Najot, 'lez Ramata.

20. Saul a gasas eta soudarded evid krapa e David : hogen pa welas ar re-mañ eur vandenn profeded pere a ziougane, ha Samuel savet dreisto, spered an Aotrou a grogas ivez enno, hag i ivez en em lakaas da ziougani.

21. Pa oe lavaret kement-se da Zaul, e kasas soudarded all : hag i a ziouganas ivez. Ha Saul a gasas adarre soudarded eun drede wech ; hag i ivez a ziouganas. Ha Saul, o veza savet droug braz ennañ,

22. A yeas e-unan da Ramata : hag o veza deuet beteg ar puñs braz a zo e Soko, e houlennas e peleh edo Samuel ha David. Hag e oe lavaret dezañ : Setu emaint e Najot, 'lez Ramata.

23. Hag eñ a yeas da Najot, 'lez Ramata : ha spered an Aotrou o veza ivez kroget ennañ, en em lakaas da ziougani en eur gerzoud, ken na oe deuet da Najot, 'lez Ramata.

24. Hag eñ a ziwiskas ivez e zillad, hag a ziouganas gand ar re all dirag Samuel, hag a gouezas en noaz war an douar 'hed an deiz hag an noz. Ahano eo deuet al lavar-goloet : Hag ema ivez Saul e-mesk ar brofeded ?

XX. Pennad.

Kevredigez nevez etre Jonatas ha David

30. Hogen David a yeas kuit euz a Najot, 'lez Ramata, hag a zeuas da gomza ouz Jonatas, o lavaroud : Petra em-eus-me greet ? Petra eo va fallagriez, ha petra eo va fehed a-eneb da dad, ma teu da glask va buhez ?

31. Ha Jonatas a lavaras dezañ : Doue ra viro : ne varvi ket, rag va zad ne ra netra, na braz na bihan, heb e lavaroud din. Hag an dra-ze hepken en-defe-eñ kuzet din ? Ne hoarvezo ket kement-se.

32. Hag eñ a douas adarre da Zavid. Ha David a lavaras dezañ : Da dad a oar ervad penaoz em-eus kavet gras dirag da zaoulagad ; hag eñ en-devezo lavaret : Na ouezet ket Jonatas kement-mañ, gand aon na zeuje da hlahari. Rag evel ma eo beo an Aotrou, ha ma eo bet da ene, n'ez eus (evid e lavaroud) nemed eur hammed etre me hag ar maro.

33. Ha Jonatas a lavaras da Zavid : Kement a liviri din a rin evidout.

34. Ha David a lavaras da Jonatas : Warhoaz ema ar henta euz ar miz, ha me a zo boazet da azeza e-kichenn ar roue evid debri : va lez eta da guza en eur park beteg pardaez an trede deiz.

35. Mar deu da dad da zelloud ha da houlenn ahanon, e liviri dezañ : Goulennet en-deus David diganen va aotre evid mond buan da Vetlehem, e gêr, o veza ma ez eus eno eur sakrifis liduz evid oll re e vreuriezh.

36. Ma lavar eñ : Mad, ar peoh a vezo gand da zervijer : hogen mar sav droug ennañ, gouez penaoz eo krenn e zrougiez.

37. Gra eta an drugarez-mañ e-keñver da zervijer, pa eh-eus lakaet kevredigez an Aotrou etre te ha da zervijer ; ma ez eus eur fallagriez bennag ennon, va laz ha n'am has ket dirag da dad.

38. Ha Jonatas a lavaras dezañ : Doue ra viro kement-se diouzit : rag ma anavezan penaoz eo direiz drougiez va zad ouzit, he roin evid gwir da anaoud dit.

39. Ha David a lavaras da Jonatas : Piou he roy da anaoud din, ma lavar dit da dad eun dra haro eme eneb ?
40. Ha Jonatas a lavaras da Zavid : Deus, ha deom war ar mêz. Ha pa oent eet o-daou er-mêz,
41. E lavaras Jonatas da Zavid : Aotrou, Doue Izrael, ma hellan anaoud mennoz va zad warhoaz pe goude warhoaz, ha mar bez eun dra bennag a vad e gounid David ; ma ne gasan ket dit raktal, ha ma n'e roan da anaoud dit,
42. Ra ray an Aotrou kement-se hag ouspenn da Jonatas. Hogen ma kendalh va zad e zrougiez ouzit, her roin da anaoud dit, hag az lezin da vond kuit, evid ma'z i e peoh ha ma vezo an Aotrou ganez, evel ma eo bet gand va zad.
43. Ha mar bevan, e ri din trugarez an Aotrou ; ha mar bezan maro,
44. Ne denni ket da drugarez diwar va zi da viken, pa en-devezo an Aotrou diskolpet enebourien David diwar an douar beteg an diweza. Ra vezo tennet Jonatas euz e di, ha ra vezo tennet David gand an Aotrou euz a zaouarn e enebourien.
45. Jonatas a reas eta kevredigez gand ti David ; hag an Aotrou a dennas David euz a zaouarn e enebourien.
46. Ha Jonatas a reas ivez da Zavid toui dezañ, o veza ma kare anezañ ; rag e garoud a ree evel e ene.
47. Ha Jonatas a lavaras dezañ : Warhoaz ema ar henta euz ar miz, hag e vezi klasket :
48. Rag da gador a vezo goulo a-hed daou zevez. Neuze e tiskenni buan ha te teui d'al leh e pehini e tleez beza kuzet d'an deiz e pehini e heller laboura ; hag eh azezi e-tal ar mên a zo anvet Ezel.
49. Ha me a laosko tri zenn³⁰¹ hir outañ, evel ma fellfe din tenna d'ar gwenn³⁰².
50. Neuze e kasin eur paotr hag e livirin dezañ : Kee, ha degas din va birou.
51. Ma lavaran d'ar paotr : Setu ar birou a zo en tu-mañ dit, degas anezo din : deus d'am havoud, rag ar peoh a zo dit ha n'eus droug ebed, evel ma eo beo an Aotrou. Hogen ma lavaran evel-henn d'ar paotr : Setu ar birou a zo en tu all dit : kee e peoh, rag an Aotrou az kas kuit.
52. Hogen e-keñver ar ger on-eus lavaret te ha me, ra vezo an Aotrou etre me ha te da viken.
53. David eta en em guzas er park ; hag ar henta euz ar miz o veza deuet, ar roue a azezas evid debri boued.
54. Ha pa oe azezet ar roue, hervez e voaz, war e gador a oa ouz ar voger, e savas Jonatas hag eh azezas Abner e-kichenn Saul ; ha leh David a chomas goulo.
55. Ha Saul ne lavaras netra en deiz-se : rag eñ a grede ez oa marteze c'hoarvezet da Zavid penaoz ne oa na glan na glannaet.
56. Ha pa zeuas an eil devez euz ar miz, e oe c'hoaz gwelet goulo leh David. Ha Saul a lavaras da Jonatas e vab : Perag n'eo ket deuet da zebri mab Isai, na deh nag hirio ?
57. Ha Jonatas a lavaras da Zaul : Va fedet en-deus stard d'e lezel da vond da Vetlehem,
58. O lavaroud : Va lez da vond, rag eur sakrifis liduz a zo en or hêr, hag unan euz va breudeur a zo deuet d'am herhoud : bremañ eta ma em-eus kavet gras dirag da zaoulagad, ez in buan hag e welin va breudeur. Evel-se eo n'eo ket deuet ouz taol ar roue.
59. Neuze Saul o sevel droug ennañ ouz Jonatas, a lavaras dezañ : Mab kast, ha ne ouzon-me ket penaoz e karez mab Isai, en da vez hag e mez mezegez³⁰³ da vamm ?

³⁰¹ tri zenn : tri bir.

³⁰² d'ar gwenn : ar "gwenn", leh ma hounezer pa erru ar bir eno.

60. Rag keit ha ma vevo mab Isai war an douar, ne vezi ket diwallet na da rouantelez. Rag-se laka e gerhoud ha degas eñ din ; rag red eo dezañ mervel.
61. Ha Jonatas a lavaras da Zaul, e dad : Perag e varvo-eñ ? Petar en-deus-eñ greet ?
62. Ha Saul a grogas en eur goaf evid skei gantañ. Ha Jonatas a anavezaz penaoz en-doa e dad lakaet en e benn laza David.
63. Jonatas a zavas neuze diouz taol, hag eun droug braz ennañ, ha ne zebras ket a voued en eil devez euz ar miz ; rag glaharet e oa diwar-benn David, o veza m'en-doa e dad e vezekaet.
64. Ha da houlou-deiz e teuas Jonatas d'ar park evel ma oa en em glevet gand David, hag eur paotr bihan gantañ.
65. Hag eñ a lavaras d'e baotr : Kee, ha degas din ar birou a dennin. Ha pa endoe redet ar paotr, e tennas eur bir all en tu all d'ar paotr.
66. Ha pa oe deuet ar bugel d'al leh e pehini edo ar henta bir en-doa tennet Jonatas, e harmas Jonatas a-dreñv dezañ hag e lavaras : Setu ema ar bir en tu all dit.
67. Ha Jonatas a harmas adarre a-dreñv ar paotr, o lavaroud : Hast afo ha na zale ket. Paotr Jonatas a zastumas eta ar birou hag o degasas d'e vestr.
68. Hag ar paotr ne ouie e neb doare ar peza a reed ; Jonatas ha David hepken a ouie an dra.
69. Neuze Jonatas a roas e armou d'ar paotr hag a lavaras dezañ : Kee, ha kas an dra-mañ da gêr.
70. Ha pa oe eet kuit ar paotr, David a zavas euz al leh ma edo a oa troet ouz ar hreisteiz, hag o veza en em strinket d'an douar, eh azeulas teir gwech : hag o poka an eil d'egile, en em lakajont da ouela o-daou, ha David c'hoaz muioh.
71. Ha Jonatas a lavaras da Zavid : Kee e peoh : kement on-eus touet on-daou e ano an Aotrou, o lavaroud : Ra vezo an Aotrou etre me ha te, etre va gouenn ha da ouenn, ra bado da viken.
72. Ha David a zavas hag a yeas kuit ; ha Jonatas a zistroas da gêr.

XXI. Pennad.

David a ya da Nobe. Ahano en em denn e ti Akis, roue Get.

1. Neuze David a yeas da Nobe etrezeg Akimelek ar Beleg-braz : hag Akimelek a oe souezet-braz, o veza ma oa deuet David ; hag eñ a lavaras dezañ : Perag out-te dan-unan, ha n'eus-eñ den ganez³⁰⁴ ?
2. Ha David a lavaras da Akimelek, ar Beleg-braz : Ar roue en-deus gourhemennet din eun dra, o lavaroud : Na ouezet den perag em-eus da gaset, na petra em-eus gourhemennet dit : ha dre ze eo em-eus roet emwel d'am zud tu-mañ ha tu-hont.
3. Ma eh-eus eta bremañ eun dra bennag dindan da zorn, pe pemp torz vara, pe ar peza a gavi, ro e din.
4. Hag ar Beleg-braz a lavaras da Zavid : N'em-eus ket a vara evid ar bobl dindan va dorn, hogen bara santel hepken : gand ma vezo glan da dud, dreist-oll e-keñver ar gwragez.

³⁰³ mezegez : mez da vamm.

³⁰⁴ ha n'eus-eñ den ganez : hag-eñ n'eus den ganez ?

5. Ha David a lavaras d'ar Beleg-braz : E-keñver ar pezh a zell ouz ar gwraez, n'om ket eet d'o havoud abaoe deh hag an derhent emañ en em lakaet en hent ; ha dillad va zud a zo ivez glan. Koulskoude an hent en-deus o zaotret ; hogen hiro e vezint glannaet ivez en o dillad.

6. Ar Beleg-braz a roas eta dezañ bara santellaet ; rag ne oa eno bara all ebed nemed ar baraou kinnig a oa bet tennet a-zirag an Aotrou evid lakaad baraou tomm.

7. Hogen en deiz-se en em gavas eno, en diabarz euz a daberakl an Aotrou, unan euz a zervijerien Saul, eun Idumead anvet Doeg, ar henta e-touez mesaerien Saul.

8. Hogen David a lavaras da Akimelek : Ha n'eh-eus ket dindan da zorn eur spig pe eur hleze ? Rag n'em-eus ket kaset ganen va hleze, na va armou, o veza ma haste kalz gourhemenn ar roue.

9. Hag ar Beleg-braz a lavaras : Setu kleze Goliath ar Filistin eh-eus lazeta e traonienn an Terebint, hag a zo goloet gand eun tamm mezer a-dreñv d'an efod. Mar fell dit e gemeroud, kemer : rag n'eus amañ hini all ebed nemetañ. Ha David a lavaras : N'eus hini heñvel ouz hennez ; ro eñ din.

10. David eta a zavas hag a dehas en deiz-se euz a-zirag Saul ; hag ez eas etrezeg Akis, roue Get.

11. Ha servijerien Akis a lavaras dezañ pa weljont David : Ha n'eo ket hennez David, roue ar vro ? Ha n'eo ket evid hennez eo bet kanet en dañsou, o lavaroud : Saul en-deus lazeta mil, ha David deg mil ?

12. Hogen David a lakaas ar homziou-ze en e galon, hag en-doe eur spont braz rag Akis, roue Get.

13. Hag eñ a zislabere e zremm dirazo, hag en em leze da goueza etre o daouarn, hag en em stoke ouz postou an nor, hag a leze e hlaourenn da goueza war e varo.

14. Hag Akis a lavaras d'e zervijerien : C'hwi a wel penaoz an den-ze a zo diskiant. Perag hoh-eus-hu e zegaset din ?

15. Ha n'on-eus-ni ket a-walh a dud diboell, evid degas hemañ da ziboella dirazon ? Hag an den-ze a dlefe beza deuet em zi ?

XXII. Pennad.

David a ya da gavoud roue Moab. Saul a laka da laza beleien Nobe.

1. David eta a yeas kuit ahano hag a dehas e keo Odollam. Ha pa glevas e vredeur kement-se, hag oll di e dad, e tiskennjont di d'e gavoud.

2. Hag ar re oll a oa enkrezet, hag ar re a oa karget a zleou, hag ar re a oa rehet en em zastumas en-dro dezañ : hag eñ a oe da briñs dezo, ha war-dro pevar-hant den en em gavas gantañ.

3. Hag ahano ez eas David da Vasfa a zo e bro Moab, hag e lavaras da roue Moab : Choment ganeoh, me ho ped, va zad ha va mamm, ken na ouezin petra a ray Doue din.

4. Hag eñ o lezas e-kichen roue Moab ; hag i a chomas en e di keit ha ma oe David er hreñv³⁰⁵.

5. Ha Gad ar profed a lavaras da Zavid : Na chom ket er hreñv : kee er-mêz ha kerz etrezeg douar Juda. Ha David en em lakaas en hent, hag a zeuas da goad Haret.

³⁰⁵ er hreñv : er kreñv-leh.

6. Ha Saul a glevas penaoz e oa bet gwelet David hag an dud a oa gantañ. Hogen Saul pa edo e Gabaa, hag en eur hoad 'lez Rama, gand eur speg en e zorn, hag e oll zervijerien war e dro,

7. E lavaras d'e zervijerien a oa en e gichenn : Selaouit bremañ, bugale Jemini ; ha mab Isai a roy deoh oll parkou ha gwiniennou ; hag e lakay ahanoh oll da villinerien³⁰⁶ ha da gantenerien³⁰⁷ ?

8. O veza ma hoh-eus oll en em gavet em eneb ha n'ez eus hini a gement e ziskuillfe din ; pa eo gwir penaoz va mab e-unan en-deus greet kevredigez gand mab Isai ? N'eus ket unan ahanoh en-defe truez ouzin nag her roje da anaoud din ; o veza ma en-deus va mab lakaet da zevel ouzin unan euz va zervijerien, pehini beteg hirio en-deus aozet spiou em eneb.

9. Neuze Doeg, an Idumead, pehini en em gave eno hag a oa ar henta e-touez servijerien Saul, a lavaras : Gwelet em-eus mab Isai e Nobe, e ti Akimelek ar Beleg-braz, mab Akitob.

10. Hag hemañ en-deus goulennet kuzul digand an Aotrou diwar e benn, hag en-deus roet boued dezañ ; hag en-deus ivez roet dezañ kleze Goliat ar Filistin.

11. Ar roue eta a gasas da gerhoud Akimelek ar Beleg-braz, mab Akitob, hag oll veleien ti e dad a oa e Nobe ; hag i a zeuas oll da gavoud ar roue.

12. Ha Saul a lavaras da Akimelek : Selaou, mab Akitob. Hag eñ a lavaras : Setume, Aotrou.

13. Ha Saul a lavaras dezañ : Perag hoh-eus-hu en em zavet em eneb, te ha mab Isai ? ; hag eh-eus-te roet dezañ bara hag eur hleze, hag eh-eus-te goulennet kuzul digand Doue diwar e benn, evid ma savje em eneb ha ma aozje spiou ouzin beteg hirio ?

14. Hag Akimelek a respontas d'ar roue, hag a lavaras : Piou eo an hini e-touez da zervijerien a zo ker feal ha David, eñ pehini a zo mab-kaer d'ar roue, a gerz dioh da hourhemenn, hag a ro kement a hloar d'az ti ?

15. Hag a hirio eo ez on-me deuet da houlen kuzul digand Doue diwar e benn ? Pell eo kement-se diouzin : na arvaret ket ar roue eun dra evel-se warnon, na war oll di va zad, rag da zervijer ne ouie netra war kement-se na nebeud na kalz.

16. Hag ar roue a lavaras : Lakaet e vezi d'ar maro, Akimelek, te hag oll di da dad.

17. Hag ar roue a lavaras d'ar warded a oa en-dro dezañ : Troit, ha lazit beleien an Aotrou, rag gand David ema o dorn³⁰⁸ : i a ouie ervad penaoz e tehe, ha n'o-deus ket e zisklêriet din. Hogen servijerien ar roue ne fellas ket dezo astenna o daouarn war beleien an Aotrou.

18. Hag ar roue a lavaras da Zoeg : Tro, te, hag en em daol war ar veleien. Ha Doeg an Idumead a droas, hag en em daolas war ar veleien, hag a lazas en deiz-se pemp den ha pevar-ugent gwisket gand an efod lin.

19. Lakaad a reas ivez laza gand ar hleze e Nobe, kêr ar veleien, ar wazed, hag ar merhed, hag ar vugale, hag ar re a oa ouz ar vronn, hag an ejenned, hag an ezen, hag an deñved.

20. Hogen unan euz a vibien Akimelek, mab Akitob, pehini a oa anvet Abiatar, o veza tehet ahano, a yeas etrezeg David,

21. Hag a roas da anaoud dezañ penaoz Saul en-doa lazet beleien an Aotrou.

22. Ha David a lavaras da Abiatar : Me a ouie ervad en deiz-se, pa edo eno Doeg an Idumead, penaoz heb arvar her roje da anaoud da Zaul. Me a zo abeg da varo oll di da dad.

³⁰⁶ da villinerien : unan a zo e penn mil den.

³⁰⁷ gantenerien : unan a zo e penn kant den.

³⁰⁸ gand David ema o dorn : emiant a-du gand David.

23. Chom ganen, n'az-pezh ket a aon : mar klask eur re va buhez, e klasko ivez da vuhez ; ha ganen e vezi diboaniet.

XXIII. Pennad.

David en em denn e distro Zif. Saul a ya war e lerh heb ma hell e dizoud.

1. Neuze e teujont da lavaroud da Zavid : Setu ar Filistined a stourm ouz Seila ; hag i a wast ar solierou.
2. David eta a houlenas kuzul digand an Aotrou, o lavaroud : Ha mond a rin-me, ha trehi a rin-me ar Filistined ? Hag an Aotrou a lavaras da Zavid : Kee, hag e trehi ar Filistined, hag e tieubi Seila.
3. Hag ar re a oa gand David a lavaras dezañ : Setu, ni on-eus aon, ha ni er Judea : pegement e vezo brasoh on aon, mar deom da Zeila a-eneb arme ar Filistined ?
4. David eta a houlenas adarre kuzul digand an Aotrou, pehini a lavaras dezañ : Sao, ha kee da Zeila ; rag me a lakay ar Filistined etre da zaouarn.
5. David eta a yeas da Zeila gand e dud hag a stourmas ouz ar Filistined, hag a lazaz eul lod braz anezo ; kas a reas gantañ o loened, hag e tiboanias tud Seila.
6. Hogen pa'z eas Abiatar, mab Akimelek, da gavoud David e Seila, e tougas gantañ an Efod.
7. Roet e oe da anaoud da Zaul penaoz e oa deuet David da Zeila. Ha Saul a lavaras : Doue en-deus e lakaet etre va daouarn : kemeret eo, pa eo eet en eur gêr pehini he-deus perzier ha potaillou.
8. Ha Saul a hourhemennas d'an oll bobl diskenni da Zeila evid stourmi hag evid gronna David hag e dud.
9. Pa glevas David penaoz eh aoze Saul droug outañ e kuz, e lavaras da Abiatar ar Beleg : Laka an efod.
10. Ha David a lavaras : Aotrou, Doue Izrael, klevet en-deus da zervijer penaoz en em aoz Saul evid dond da Zeila da zismantra kêr en abeg din.
11. Ha tud Seila a lakay ahanon etre e zaouarn ? Ha diskenni a ray Saul, evel ma en-deus e glevet da zervijer ? Aotrou, Doue Izrael, ro hen da anaoud d'az servijer. Hag an Aotrou a lavaras : Diskenni a ray.
12. Ha David a lavaras : Ha tud Seila a lakay ahanon ha va zud etre daouarn Saul ? Hag an Aotrou a lavaras : Lakaad a raint.
13. David eta hag e dud pere a oa war-dro c'hweh-kant, a yeas kuit euz a Zeila hag a gildroe tu-mañ tu-hont, heb gouzoud war pe zu mond. Ha lavaret e oe da Zaul penaoz e oa eet David diouh Seila hag e oa tehet kuit : rag-se ne fellas mui dezañ mond di.
14. Hogen David a chome en distro, el lehiou kreñva, hag eñ en em dennas war menez distro Zif, menez goloet a wez : ha Saul a glaske anezañ bemdez : hogen Doue n'hel lakaas ket etre e zaouarn.
15. Ha David a welas penaoz Saul a oa deuet er-mêz evid klaskoud e vuhez³⁰⁹ ; hogen David a oa e distro Zif er hoad.
16. Ha Jonatas, mab Saul, a zavas hag a yeas da gavoud David er hoad ; hag eñ a greñvaas e zorn e Doue³¹⁰, o lavaroud dezañ :

³⁰⁹ klaskoud e vuhez : klask e laza.

³¹⁰ eñ a greñvaas e zorn e Doue : a greñvaas e fiziañs e Doue.

17. N'az-pezh ket a aon ; rag dorn Saul, va zad, n'az kavoz ket ; te a reno war Izrael, ha me a vezo da eil dit ; ha Saul, va zad, her goar e-unan.

18. Hag i o-daou a reas kevredigez dirag an Aotrou : ha David a chomas er hoad ; ha Jonatas a zistroas d'e di e-unan.

19. Koulskoude tud Zif a bignas etrezeg Saul e Gabaa hag a lavaraz dezañ : Ha n'ema-eñ ket David kuzet en on touez el lehiou kreñva euz ar hoad, e kreh Hachila a zo war an tu dehou euz an distro ?

20. Bremañ eta, evel ma eo bet c'hoant dit da ziskenni, diskenn ; ha deom-ni e vezo e lakaad etre daouarn ar roue.

21. Ha Saul a lavaraz : Benniget ra viot-hu gand an Aotrou, o veza ma hoh-eus bet truez ouzin.

22. It eta, me ho ped, hag en em aozit buan, ha klaskit gand evez braz, ha sellit ervad ouz al leh e pehini en em gav, hag ouz piou en-devezo e welet eno ; rag eñ a oar ervad penaoz eh aozan spiou outañ gand gwennded³¹¹.

23. Sellit piz ha gwelit an oll lehiou e pere en em guz : ha pa vezo pep tra diarvar, distroit d'am havoud evid ma'z in ganeoh : ha pa ve en em guzet en douar, e houillin³¹² anezañ e oll viliedou³¹³ Juda.

24. Hag i a zavas hag a yeas da Zif a-raog Saul : hogen David hag e dad a oa distro e Maon, er gompezenn, war an tu dehou euz a Jesimon.

25. Saul eta gand e dud a yeas de glaskoud : ha David o veza e glevet, a ziskennas raktal etrezeg ar roh hag a chomas e distro Maon : pa glevas Saul kement-se, ez eas war-lerh David e distro Maon.

26. Ha Saul a yee a-hed ar menez war eun tu, ha David gand e dud a yee a-hed ar menez war an tu all. Hogen David ne grede mui dezañ e hellfe tehoud euz a zirag Saul ; rag Saul hag e dud a gelhie David hag e dud e doare eur gurunenn, evid o hemeroud.

27. Hogen eur hannad a zeuas da gavoud Saul hag a lavaraz dezañ : Hast, ha deus, rag ar Filistined o-deus greet eun argadenn er vro.

28. Saul eta a zistroas war e giz, ha n'ez eas mui war-lerh David ; hogen mond a reas da ziarbenna ar Filistined : rag-se eo bet anvet al leh-se Roh ar rann³¹⁴.

XXIV. Pennad.

Saul a anavez dinamded David.

1. David eta a bignas ahano hag a chomas e lehiou kreñv e Engaddi.

2. Ha pa oe distroet Saul goude beza bet war-lerh ar Filistined, e oe roet da anaoud kement-mañ dezañ, o lavaroud : Setu ema David e distro Engaddi.

3. Saul eta o kemeroud tri mil den dilennet e-touez Izrael oll a gerzas evid klaskoud David hag e dud, beteg war ar reier ar re harva, war bere ne bign nemed ar gevr-gouez.

4. Hag eñ a zeuas da barkou deñved a oa war e hent : hag eno ez oa eur heo e pehini ez eas Saul evid karza e gov : hogen David hag e dud a oa kuzet e goueled ar heo.

³¹¹ gand gwennded : ? Tano eo e fri.

³¹² e houillin : ? e klaskin.

³¹³ e oll viliedou : e-barz oll viliedou, mil den a-gevred.

³¹⁴ Roh ar rann : ?

5. Ha tud David a lavaras dezañ : Setu an deiz a behini en-deus an Aotrou lavaret dit : me a lakay da enebour etre da zaouarn, evid ma ri dezañ evel ma kiri. David eta a zavas hag a drohas gouestad bevenn rokedenn Saul.

6. Goude-ze David en -doe keuz en e galon da veza trohet bevenn rokedenn Saul.

7. Hag eñ a lavaras d'e dud : Ra viro an Aotrou na rajen an dra-ze d'an aotrou, da eouliet an Aotrou³¹⁵, na lakajen va dorn warnezañ, o veza ma eo eouliet an Aotrou.

8. Ha David a harzas ouz e dud gand e gomziou ; ha n'o lezas ket da zavel a-eneb Saul : ha Saul a zavas euz ar heo hag a yeas en e hent.

9. Hogen David a zavas ivez war e lerh ; hag o veza eet er-mêz euz ar heo, a harmas a-dreñv dezañ, o lavaroud : Aotrou, va roue. Ha Saul a zistroas da weloud : ha David oh en em strinka d'an douar, a azeulas,

10. Hag a lavaras da Zaul : Perag e selaouez-te ar re a lavar dit : David a glask an tu da ober droug dit ?

11. Setu hirio o-deus gwelet da zaoulagad, penaoz en-deus an Aotrou da lakaet etre va daouarn er heo. C'hoant em-eus bet d'az laza ; hogen da espernet em-eus, o veza ma em-eus lavaret : Ne astennin ket va dorn war va aotrou, rag eouliet an Aotrou eo³¹⁶.

12. Gwel da-unan, va zad, hag anavez bevenn da rokedenn em dorn ; ha penaoz pa em-eus trohet bevenn da rokedenn, n'eo ket fellet din astenn va dorn warnout : sell ha gwel penaoz n'eus em dorn na droug na fallagriez, ha n'em-eus ket pehet en da eneb ; hogen te a aoz spiou a-eneb va buhez, evid he lemel diganen.

13. Ra varno an Aotrou etre me ha te, ha ra veñjo an Aotrou ahanon diouzit : hogen na zavo ket va dorn warnout.

14. Dih al lavar koz : Euz ar re fallagr e teu ar fallagriez : na zavo ket va dorn warnout.

15. War-lerh piou ez ez, roue Izrael ? War-lerh piou ez ez ? War-lerh eur hi maro ez ez, ha war-lerh eur hwenenn.

16. Ra vezo an Aotrou barner ha ra varno etre me ha te : ra zello ha ra varno va zra-me, ha ra denno ahanon euz da zaouarn.

17. Hogen goude m'en-doe David komzet evel-se ouz Saul, e lavaras Saul dezañ : Ha n'eo ket hounnez da vouez, va mab David ? Ha Saul a zavas e vouez en eur ouela.

18. Hag eñ a lavaras da Zavid : Gwelloh out egedon : rag n'eh eus greet nemed vad din, ha n'em-eus greet nemed droug dit.

19. Ha te eh eus diskouezet hirio ar mad eh eus greet din, pa en-deus an Aotrou va lakaet etre da zaouarn, ha n'eh eus ket va lazet.

20. Rag piou eo an hini a gav e enebour, hag e lez da vond en e hent heb ober droug dezañ ? Ra zistaolo dit an Aotrou an drugarez eh eus bet em heñver en deiz-mañ.

21. Hag o veza ma ouzon ervad a-vremañ penaoz e tleez rena, ha ma vezo en da zorn rouantelez Izrael,

22. Tou din dre an Aotrou penaoz ne zispenni ket va gouenn em goude, ha na denni ket va ano euz a di va zad.

23. Ha David e douas da Zaul. Saul eta a zistroas d'e di ; ha David hag e dud a bignas e lehiou kreñva.

XXV. Pennad.

³¹⁵ da eouliet an Aotrou : d'an Aotrou a zo bet eouliet.

³¹⁶ eouliet an Aotrou eo : eouliet eo an Aotrou.

Maro Samuel. David a zimez gand Abigail ha gand Ac'hinoam.

1. Hogen Samuel a varvas, hag oll Izrael en em strollas, hag a ouelas anezañ ; hag i a vezias anezañ en e di e Ramata. Ha David a zavas, hag a ziskennas da zistro Faran.
2. Hogen bez' e oa eun den e distro Maon, pehini en-doa e vadou war ar Harmel : pinvidig-braz e oa an den-ze ; tri mil dañvad ha mil gavr en-doa : ha c'hoarvezoud a reas ma touzas e zeñved war ar Harmel.
3. Ano an den-ze a oa Nabal, hag ano e wreg Abigail : ar wreg-se a oa fur ha kaer ; hogen heh ozah a oa kaled, ha droug, ha fallagr. Euz a ouenn Kaleb e oa.
4. Pa glevas David en distro penaoz Nabal a douze e zeñved,
5. E kasas deg paotr yaouank, hag e lavaras dezo : Pignit war ar Harmel ; hag it da gavoud Nabal, ha salutit eñ gand peoh em ano ;
6. Ha livirit dezañ : Ra vezo ar peoh d'am breudeur ha dit ; rag vezo ar peoh d'az ti, ra vezo ar peoh da gement eh eus.
7. Klevet em-eus penaoz da vugelien pere a oa ganeom en distro a zo o touza da zeñved : biskoaz n'on-eus o heskinet, ha biskoaz n'eo bet dianket hini euz o deñved, e-keid ma int bet ganeom war ar Harmel.
8. Goulenn eñ digand da dud, hag i hel lavaro dit. Hogen bremañ ra gavo da zervijerien trugarez dirag da zaoulagad ; rag en eun deiz mad e teuom : ro d'az servijerien, ha da Zavid, da vab, ar pez en em gavo dindan da zorn.
9. Pa oe deuet paotred David, e leverjont kement-se da Nabal e ano David ; hag e tavjont.
10. Hogen Nabal o komza ouz paotred David, a lavaras : Piou eo David ? Ha piou eo mab Isai ? Klaz a zervijerien a zo hirio hag a deh diogh o mistri.
11. Ha kemeroud a rin-me va bara, ha va dour, ha kig al loened em-eus lazet evid va zouzerien, evid o rei da dud ha ne ouzon a beleh int ?
12. Paotred David a zistroas en o hent, ha pa oent deuet d'e gavoud, e leverjont dezañ kement en-doa lavaret Nabal dezo.
13. Neuze David a lavaras d'e dud : Gourizet pep hini e gleze. Ha pep hni a hourizas e gleze ; ha David ivez a hourizas e gleze : ha war-dro pevar-hant den a yeas da heul David ; ha daou-hant a chomas gand ar pakadou.
14. Hogen unan euz a zervijerien Nabal a zeuas da lavaroud da Abigail, e wreg : Setu David en-deus kaset kannaded euz an distro, evid ober e hourhemennou d'on aotrou : hag eñ en-deus o distaolet gand garventez.
15. An dud-ze a zo bet mad en or heñver, ha n'o-deus ket on heskinet : ha n'on-eus kollet netra, e-keit ha m'on-eus kerzet ganto en distro :
16. Evel eur voger int bet evidom kerkoulz en noz evel en deiz, e-keit ha ma on-eus kaset on deñved da beuri en o hreiz.
17. Dre ze gwel ha soñj petra a ri : rag e c'hoarvezo droug a-eneb da ozah hag a-eneb da di ; rag mab Belial eo, en heveleb doare na hell den komza outañ.
18. Abigail eta a hastas afo, hag a gemeras daou-hant bara, ha daou voughken gwin³¹⁷, ha pemp tourh poaz, ha pemp boezellad bleud, ha kant pakad rezin seh, ha daou-hant goñvor fiez ; hag hi o lakaas war azened ;
19. Hga hi a lavaras d'he faotred : It em raog, setu ez an war ho lerh ; hogen ne lavaras ket an dra-mañ da Nabal, heh ozah.
20. Pa oa eta pignet-hi war eun azen, ha pa ziskenne ouz troad ar menez, David hag e dud a ziskenne ivez rag-eneb dezi : hag hi en em gavas ganto.

³¹⁷ daou voughken gwin : daou zah-gwin.

21. Ha David a lavare : En aner eo em-eus miret en distro kement a oa d'an den-ze, ha n'eo ket bet kollet netra euz ar pezh a oa dezañ, pa zistaol-eñ din an droug evid ar mad.

22. Ra ray Doue kement-se hag ouhpenn da enebourien David, ma lezan netra a-benn ar mintin e-beo euz a gement a zo dezañ, ma lezan zoken eur hi.

23. Hogen Abigail pa welas David, eh hastas afo hag e tiskennas diwar heh azen, hag en em strinkas war he genou dirag David, hag eh azeulas troet ouz an douar :

24. Hag oh en em deurel e-harz e dreid, e lavaras-hi : Ra gouezo warnon, va aotrou, ar fallagriez-se : lez, me az ped, da vatez da gomza ouzit : ha selaou komziou da blah³¹⁸.

25. Na lakaet ket, me az ped, va aotrou ha va roue, e galon war Nabal an den fallagr ; rag evel ma eo foll e ano³¹⁹, ar follentez a zo ivez gantañ : hogen me, da vatez, o ! va aotrou, n'em-eus ket gwelet ar baotred eh-eus degaset.

26. Bremañ eta, o ! va aotrou, evel ma eo beo an Aotrou ha ma eo beo da ene, pehini en-deus miret ouzit na zeujes da skuilla gwad, hag en-deus dalhet da zorn dit ; ra zeuy bremañ an enebourien, pere a glask an tu da ober droug d'an aotrou, da veza heñvel ouz Nabal.

27. Rag-se kemer an traou-mañ a zegas da vatez dit, va aotrou, ha ro ivez d'ar baotred a zo war-lerh va aotrou.

28. Distaol ar fallagriez d'az matez ; rag an Aotrou a ray dit eun ti feal, o veza, va aotrou, ma stourmez evid an Aotrou ; ha ne vezo ket kavet a zrougiez ennout e-keit ha ma vevi.

29. Mar sav biskoaz³²⁰ den evid da heskina hag evid klask da vuhez, buhez va aotrou ra vezo miret evel e bodenn³²¹ ar re veo, gand an Aotrou da Zoue : hogen buhez da enebourien ra vezo troet evel eur gorventenn hag evel eur vatalm.

30. Pa en-devezo eta greet an Aotrou dit, o ! va aotrou, kement mad en-deus lavaret e roje dit, ha ma en-devezo da lakaet da benn war Izrael,

31. Ne vezo ket da enkrez ha da rebech e kalon va aotrou, beza bet skuillet gwad dinamm, pe beza bet en em veñjet e-unan : ha pa en-devezo Doue greet vad d'am aotrou, ez-pezo koun euz da vatez.

32. Ha David a lavaras da Abigail : Benniget ra vezo an Aotrou, Doue Izrael, pehini en-deus da zegaset hirio em raog ; ha benniget ra vezo da lavar ;

33. Ha benniget ra vezi da-unan, te pehini eh-eus miret ouzin na rajen droug dit na skuillfen gwad, ha n'en em veñjjen gand va dorn va-unan.

34. Paneved-se, evel ma eo beo an Aotrou, Doue Izrael, pehini en-deus miret ouzin na rajen droug dit : ma ne vijes deuet buan em raog, ne vije chomet netra e-beo da Nabal a-benn ar mintin, ne vije ket chomet zoken eur hi.

35. David eta a gemeras euz he dorn kement he-doa degaset dezañ, hag a lavaras dezi : Kee e peoh en da di ; setu em-eus selaouet da vouez hag em-eus enoret da zremm³²².

36. Neuze Abigail a zistroas etrezeg Nabal : ha setu en-doa-eñ eur banvez en e di, evel banvez eur roue, ha kalon Nabal a oa laouen-braz, rag gwall-vezo e oa : hag hi ne lavaras ger ebed dezañ, na bihan na braz, ken na oe deuet ar mintin.

37. Hogen da houlou-deiz pa en-doe Nabal mouget e win, e lavaras e wreg kement-se dezañ. Hag e galon a zeuas evel maro ennañ, hag eñ a zeuas evel eur mên.

³¹⁸ da blah : da vatez.

³¹⁹ foll e ano : foll eo an den.

³²⁰ biskoaz : biken.

³²¹ e bodenn : e-touez.

³²² em-eus enoret da zremm : em-eus degemeret ahanout mad-tre.

38. Hag a-benn deg devez, an Aotrou a skoas gand Nabal, hag eñ a varvas.

39. Pa glevas David penaoz e oa maro Nabal, e lavaras : Benniget ra vezo an Aotrou pehini en-deus barnet abeg va dismegañs a-berz Nabal, pehini en-deus miret a zroug e zervijer : rag an Aotrou e-deus lakaet da goueza drougiez Nabal war e benn e-unan. David a gasas neuze etrezeg Abigail, evid he goulenn da wreg dezañ.

40. Paotred David a zeuas eta da gavoud Abigail war ar Harmel, hag a gomzas outi, o lavaroud : David en-deus on degaset etrezeg ennout, evid da houlenni da wreg dezañ.

41. Hag hi en em strinkas war he genou d'an douar, hag a lavaras : Setu da blah a zo da vatez evid gwalhi treid servijerien va aotrou.

42. David a gemeras ivez Ac'hinoam euz a Jezrael, hag i o-diou a oe da wragez dezañ.

43. Hogen Saul a roas Michol e verh, gwreg David, da Falti, mab Lais, pehini a oa euz a Hallim.

XXVI. Pennad.

David o veza eet e-pad an noz e telt Saul, a gas gantañ e hoof hag e gop.

1. Ha tad Zif a zeuas da gavoud Saul e Gabaa, hag a lavaras dezañ : Setu David a zo kuzet e kreh Hachila, a zo rag-eneb d'an distro.

2. Ha Saul a zavas hag a zsikennas da zistro Zif, ha gantañ tri mil den dilennet euz a Izrael, evid klask David e distro Zif.

3. Ha Saul a stegnas e gamp war kreh Hachila, pehini a zo rag-eneb d'an distro war an hent : hogen David a chome en distro : ha pa welas penaoz e teue Saul war e lerh en distro,

4. E kasas spierien, hag e oe lavaret dezañ penaoz e oa deuet Saul di evid gwir.

5. Ha David a zavas didrouz hag a zeuas d'al leh e pehini edo Saul : ha pa en-doe gwelet al leh e pehini e kouske Saul, hag Abner, mab Ner, priñs e arme., ha penaoz e oa kousket Saul en e delt, hag ar re all en-dro dezañ,

6. E lavaras Saul da Akimelek an Helead, ha da Abisai, mab Sarvia, breur Joab : Piou a ziskenno ganen etrezeg Saul er hamp ? Hag Abisai a lavaras : Me a ziskenno ganez.

7. David eta hag Abisai a zeuas etrezeg Saul a-zoug an noz ; hag i a gavas Saul gourvezet ha kousket en e delt ; hag e hoof a oa sanket dre ar beg en douar ouz penn e wele : hag Abner hag ar re all a gouske en-dro dezañ.

8. Hag Abisai a lavaras da Zavid : Doue a laka hirio da enebour etre da zaouarn ; mond a ran eta d'e doulla gand va goaf beteg an douar en eun taol, hag an eil ne vezo ket red.

9. Ha David a lavaras da Abisai : Na laz ket anezañ ; rag piou a astenno e zorn war eouliet gand an Aotrou, hag a vezo dinamm ?³²³

10. Ha David a lavaras c'hoaz : Evel ma eo beo an Aotrou, nemed ma skoje an Aotrou gantañ, pe e ve deuet an deiz euz e varo, pe e ve diskaret ha lazet en emgann.

11. Ra viro an Aotrou ouzin na astennfen va dorn war eouliet an Aotrou³²⁴ : kemer hepken bremañ ar goaf a zo ouz penn e wele hag e bod-dour³²⁵, ha deom kuit.

³²³ war eouliet gand an Aotrou, hag a vezo dinamm ? : war unan eouliet gand an Aotrou, hag-eñ e vezo dinamm ?

³²⁴ war eouliet an Aotrou : war unan bet eouliet gand an Aotrou.

³²⁵ e bod-dour : e badad-dour.

12. David eta a gemeras ar goaf hag ar pod-dour a oa ouz pennwele Saul ; hag i a yeas kuit. Ha den n'en-doa o gwelet, na gouezet kement-se, na bet dihun³²⁶ ; hogen oll e oant kousket, o veza ma oa kouezet warnezo kousk-mik an Aotrou.

13. Pa oe tremenet David en tu all, e savas war penn ar menez a-bell ; rag eur pennad bale hir a oa etre eñ hag ar hamp ;

14. Ha David a harmas ouz tud Saul hag ouz Abner, mab Ner, o lavaroud : Ha na gomzi-te ket, Abner ? Hag Abner a gomzas hag a lavaras : Piou out-te, te, pehini a harm hag a neh ar roue ?

15. Ha David a lavaras da Abner : Ha n'out ket eun den kaloneg, te ? Ha piou eo an hini a zo heñvel ouzit en Izrael ? Perag eta n'eh-eus-te ket diwallet an aotrou, da roue ? Rag unan euz ar bobl a zo deuet evid laza an aotrou, da roue.

16. N'eo ket mad ar pezh eh-eus greet. Evel ma eo beo an Aotrou, ez oh mibien ar maro, c'hwi pere n'hoh-eus ket diwallet hoh aotrou, eouliet an Aotrou. Hogen bremañ gwel peleh ema goaf ar roue, hag ar pod-dour a oa ouz penn e wele.

17. Hogen Saul a anavezaz mouez David hag a lavaras : Ha n'eo ket hounnez da vouez, va mab David ? Ha David a lavaras : Va mouez eo, aotrou, va roue.

18. Hag eñ a lavaras ivez : Pe vid tra eh heskin va aotrou e zervijer ? Petra em-eus greet ? Pe zroug a zo em dorn ?

19. Bremañ eta, me az ped, aotrou, va roue, selaou komzou da zervijer. Mar deo an Aotrou a atiz ahanout em eneb, ra zavo beteg ennañ c'hwez vad ar sakrifis : hogen mar deo mibien an dud, int milliget dirag an Aotrou, o veza ma o-deus va harluet hirio, evid na chomin ket e degouez an Aotrou, o lavaroud : Kee, servij doueed a-ziavêz.

20. Na vezet ket eta bremañ skuillet va gwad war an douar dirag an Aotrou : rag roue Izrael a zo deuet er-mêz evid klaskoud eur hwanenn, evel ma'z eer war-lerh eur glujar er menezou.

21. Ha Saul a lavaras : Pehet em-eus ; distro, David, va mab : rag ne rin mui a zroug dit, o veza ma eo bet hirio talvouduz va buhez dirag da zaoulagad : rag evel eun den diskiant em-eus greet diho doare, ha kalz traou a oa din da houzoud.

22. Ha David a gomzas hag a lavaras : Setu amañ goaf ar roue : tremenet amañ unan euz e baotred, ha kasit eñ gantañ.

23. Hogen an Aotrou a zistaolo da bep hini hervez e reiz hag e feiz : rag an Aotrou en-deus da lakaet hirio etre va daouarn, ha n'eo ket fellet din astenna va dorn war eouliet an Aotrou.

24. Hag evel ma eo bet talvouduz hirio da vuhez dirag va daoulagad, ra vezo evel-se talvouduz va buhez dirag daoulagad an Aotrou, ha ra denno anhanon e beb anken.

25. Neuze Saul a lavaras da Zavid : Ra vezi benniget, David va mab : kement a ri a vezo greet mad, ha galloudeg-braz e vezi. Neuze David a yeas en e hent, ha Saul a zistroas d'al leh ma'z edo o chom ennañ.

XXVII. Pennad.

David en em denn a-nevez etrezeg Akis, roue Get.

1. Ha David a lavaras en e galon : A-barz nemeur e kouezin marteze etre daouarn Saul. Ha n'eo ket gwell din tehoud etrezeg bro ar Filistined, evid ma tiskredo Saul ha ma ehano d'am hlaskoud e oll harzou Izrael ? En em denna a rin eta euz e zaouarn.

³²⁶ bet dihun : na bet dihunet.

2. Ha David a zavas hag a yeas kuit gand e hweh-kant den, etrezeg Akis, mab Maoc'h, roue Get.

3. Ha David a chomas gand Akis e Get, eñ hag e dud, pep hini gand e diad ; David gand e ziou wreg, Ac'hinoam euz a Jezrael, hag Abigail, gwreg Nabal euz ar Harmel.

4. Roet e oe da anaoud da Zaul penaoz e oa eet David da Het, ha ne hoantaas mui mond d'e gerhoud.

5. Hogen David a lavaras da Akis : Ma em-eus kavet gras dirag da zaoulagad, ro din eul en unan euz a gêriou ar vro-mañ, evid ma chomin eno : rag perag e chomfe da zervijer ganez e kêr ar roue ?

6. Akis a roas eta dezañ en deiz-se Siseleg : dre ze eo deuet Siseleg da roue Juda bete-vremañ.

7. An niver euz an deizioù ma chomas David e bro ar Filinistined, a oe euz a bevar miz.

8. Ha David a bigne gand e dud, hag a breize war ar Hesuried, hag ar Herzied, hag an Amelikited ; rag ar bourhiou-ze a oa pobl enno gwechall adaleg hent Sur beteg bro an Ejipt.

9. Ha David a skoe war an oll vro, ha ne leze beo na gwaz na maouez : ha goude m'en-doa kemeret an deñved, hag an ejenned, hag an ezen, hag ar hañvaled, hag an dillad, e tistroe hag e teue da gavoud Akis.

10. Hag Akis a lavare dezañ : War-zu peleh eh-eus-te argadet hirio ? Ha David a lavare : War-zu ar hreisteiz euz a Juda, ha war-zu ar hreisteiz euz a Jerameel, ha war-zu ar hreisteiz euz ar Seni.

11. David ne leze beo na gwaz na maouez, ha ne zegase hini da Het, gand aon, emezañ, ne lavarfen droug ahanom. Evel-se e ree David ; hag evel-se e oe boazet da ober e-keit ha ma chomas e bro ar Filinistined.

12. Akis eta a gredas e David, o lavaroud : Kalz a zroug en-deus greet da Izrael, e bobl : rag-se e vezo servijer din da viken.

XXVIII. Pennad.

Diweza brezel euz ar Filinistined a-eneb Saul.

1. En amzer-ze ar Filinistined a zastumas o arme, hag en em aozas evid brezelekaad ouz Izrael. Hag Akis a lavaras da Zavid : Gouez bremañ penaoz e teui ganen d'ar brezel, te ha da dud.

2. Ha David a lavaras da Akis : Bremañ e ouezi petra a ray da zervijer. Hag Akis a lavaras da Zavid : Ha me az lakay bepred da ziwall ahanon.

3. Hogen Samuel a oa maro ; hag Izrael oll en-doa e ouelet, hga i o-doa e veziet e Ramata, en e gêr dezañ. Ha Saul en-doa kaset kuit euz ar vro ar strobinnerien hag an diouganerien.

4. Ar Filinistined eta en em zastumas, a zeuas hag a stegnas o hamp e Sunam. Saul a zastumas ivez Izrael oll hag a zeuas da Helboe.

5. Ha pa welas Saul kamp ar Filinistined, e oe spontet, hag e galon a oe saouzanet-braz :

6. Hag eñ a houlenas kuzul digand an Aotrou ; hag an Aotrou ne lavaras ger dezañ, na dre an huñvreou, na dre ar veleien, na dre ar brofeted.

7. Ha Saul a lavaras d'e zervijerien : Klaskit din eur vaouez pehini he-devezo spered Piton, evid ma'z in d'he havoud, ha ma houlenin kuzul diganti. Hag e

zervijerien a lavaras dezañ : Bez' ez eus en Endor eur vaouez pehini he-deus spered Piton³²⁷.

8. En em zihiza a reas eta ; hag o veza lakaet dillad all, ez eas gand daou zen hepken ; hag e teuas dioh an noz da gavoud ar vaouez-se, hag e lavaras dezi : Diougan din dre spered Piton, ha laka da zevel ennon ar pezh a livrin dit.

9. Hag ar vaouez a lavaras dezañ : Setu te a oar petra en-deus greet Saul, ha penaoz en-deus kaset kuit euz e vro ar strobinnerien hag an diouganerien : perag eta eh aozez spiou din, evid va lakaad da vervel ?

10. Ha Saul a douas dezi dre an Aotrou, o lavaroud : Evel ma eo beo an Aotrou, ne zegouezo droug ebed diganez diwar-benn kement-mañ.

11. Hag ar vaouez a lavaras dezañ : Piou a likiin-me da zevel dit ? Hag eñ a lavaras : Laka Samuel da zevel din.

12. Hogen pa welas ar wreg Samuel, e laoskas eur griadenn vraz hag e lavaras-hi da Zaul : Perag eh-eus-te va zouellet ? Rag te eo Saul.

13. Hag ar roue a lavaras dezi : N'az-pezh ket a aon : petra eh-eus-te gwelet ? Hag ar wreg a lavaras da Zaul : Gwelet em-eus eun doue o sevel euz an douar.

14. Hag eñ a lavaras dezi : Pe zoare en-deus eñ ? Hag hi a lavaras : Eun den koz eo a zo savet, hag eñ goloet gand eur vantell. Ha Saul a anavezas penaoz e oa Samuel ; hag eñ en em strinkas war e henou d'an douar, hag a azeulas.

15. Hogen Samuel a lavaras da Zaul : Perag eh-eus-te va zennet euz va ehan evid va lakaad da zevel ? Ha Saul a lavaras : Enkrezet-braz on ; rag ar Filinistined a vrezeleka ouzin, ha Doue a zo en em dennet diouzin, ha n'eo ket fellet dezañ komza ouzin, na dre ar brofeded, na dre an huñvreou : rag-se eo em-eus da halvret, evid ma tiskouezi din petra a dlean da ober.

16. Ha Samuel a lavaras dezañ : Perag e rez-te goulennou ouzin, pa eo an Aotrou en em dennet diouzit, ha pa eo tremenet etreze da geñverer ?

17. Rag an Aotrou a ray dit evel ma en-deus e lavaret drezon : an Aotrou a rogo da rouantelezh euz da zaouarn, hag he roy da Zavid, da nesa :

18. O veza n'eh-eus ket sentet ouz mouez an Aotrou, ha n'eh-eus ket sevenet bardedigez e vuanegez a-eneb Amalek : rag-se eo en-deus an Aotrou degaset dit ar pezh a houzañvez hirio.

19. An Aotrou a lakay ivez Izrael ganez etre daouarn ar Filinistined : hogen warhoaz te ha da vibien a vezo ganen : hag an Aotrou a lakay ivez kamp Izrael etre daouarn ar Filinistined.

20. Raktal e kouezas Saul a-hwenn e gorv d'an douar ; rag spontet e oa bet gand geriou Samuel, ha n'en-doa ket a nerz, o veza n'en-doa ket debret a voued 'hed an deiz-se.

21. Ar wreg-se a yeas eta da gavoud Saul (rag eñ a oa strafuillet-braz), hag a lavaras dezañ : Setu he-deus da vatez sentet ouz da vouez ; hag em-eus lakaet va buhez etre da zaouarn : ha selaouet em-eus ar geriou eh-eus lavaret din.

22. Selaou eta bremañ ivez mouez da vatez, ha va lez da lakaad dirazout eun nebeud bara, evid p'az-pezo debret, ma teui da wellaad, ha ma helli mond en da hent.

23. Hag eñ a zinahas hag a lavaras : Ne zebrin ket. Hogen e zervijerien hag ar wreg-se her lakaas da zebri a-eneb dezañ ; hag eñ a zelaouas o mouez, a zavas diwar an douar hag a azezas war eur gwele.

24. Hogen ar vaouez-se he-doa en he zi eul leue lard, hag a lakaas e laza raktal : hag o kemeroud bleud, e veskas anezañ hag e reas bara dihoell,

³²⁷ spered Piton : unan hag a hell lakaad ar re varo da gomz.

25. A lakaas dirag Saul hag e zervijerien. Goude m'o-doe debret ar re-mañ, e savjont hag e kerzjont 'hed an noz.

XXIX. Pennad.

Priñsed ar Filinistined a laka Akis da gas kuit David da Ziseleg.

1. Hogen ar Filinistined o-doa dastumet o oll arme e Afek : hag Izrael en-doa stegnet e gamp e-harz ar feunteun a oa e Jezrael.

2. Ha priñsed ar Filinistined a gerze e penn kant den ha mil den : ha David hag e dud a oa er gward-a-dreñv gand Akis.

3. Ha priñsed ar Filinistined a lavaras da Akis : Petra a fell d'an Hebreed-se ? Hag Akis a lavaras da briñsed ar Filinistined : ha ne anavezit-hu ket David, pehini a zo bet servijer da Zaul, roue Izrael, hag a zo ganen meur a zeiz, pe meur a vloaz 'zo, ha n'em-eus kavet netra ennañ, abaoe ma eo deuet d'am haoud, bete-vremañ ?

4. Hogen sevel a reas droug e priñsed ar Filinistined outañ, hag i a lavaras dezañ : Ra zistroy an den-ze, ha ra chomo el leh e pehini eh-eus e lakaet, ha na ziskennet ket d'an emgann ganeom, gand aon na zeufe da enebour deom pa vezim en em lakaet da stourmi. Rag penaoz eh hello-eñ lakaad da derri nerz an droug a zo en e aotrou, nemed oh ol laza ni ?

5. Ha n'eo ket David diwar-benn pehini e kanent en eur zañsa o lavaroud : Saul en-deus lazet mil anezo, ha David deg mil.

6. Akis a halvras eta David hag a lavaras dezañ : Evel ma eo beo an Aotrou, te a zo reiz ha mad dirazon, ha pa'z ez ha pa zeuez ganen er hamp : ha n'em-eus kavet abeg ebed ennout, adaleg an deiz ma out deuet d'am havoud beteg an deiz-mañ : hogen ne blijez ket d'ar briñsed.

7. Distro eta ha kee e peoh, gand aon na zeufe d'en em dana daoulagad priñsed ar Filinistined.

8. Ha David a lavaras da Akis : Petra em-eus-me greet, ha petra eh-eus-te kavet ennon-me da zervijer, adaleg an deiz ma'z on en em ziskouezet dit beteg an deiz-mañ, evid na zeuin ket ha na stourmin ket a-eneb enebourien an aotrou, va roue ?

9. Hogen Akis a lavaras da Zavid : Me a oar penaoz out mad dirag va daoulagad, evel eun êl-Doue : hogen priñsed ar Filinistined o-deus lavaret : Ne bigno ket ganeom d'an emgann.

10. Sao eta dioh ar mintin, te ha servijerien da vestr a zo deuet ganez : Ha goude ma viot savet dioh an noz, pa houlaouo an deiz, it kuit.

11. Evel-se David a zavas gand e dud dioh an noz, evid mond en hent dioh ar mintin hag evid distrei da vro ar Filinistined : hag ar Filinistined a bignas da Jezrahel.

XXX. Pennad.

David a zo treh d'an Amalekited.

1. Pa zeuas David hag e dud da Ziseleg an trede deiz, an Amalekited o-dao greet eun argadenn dioh tu ar hreisteiz war Dizeleg : hag i o-doa he hemeret ha lakaet an tan enni.

2. Kaset o-doa ganto da sklavezed ar merhed a oa enni : adaleg ar vihanna beteg ar vrasa ; n'o-doa lazet den, hogen o haset o-doa ganto, hag i a yee en o hent.
3. Pa oe eta deuet David hag e dud da gêr, ha pa he havjont devet, hag o gwrazez, hag o mibien, hag o merehd kaset e sklaverez,
4. David hag ar bobl a oa gantañ a zavas o mouez en eur ouela, ken na oe mui a zaerou en o daoulagad.
5. Diou wreg David, Achinoam euz a Jezrael, hag Abigail, gwreg Nabal euz ar Harmel, a oa bet kaset ivez e sklaverez.
6. Ha David a oe glaharet-braz : rag ar bobl a felle dezi e labeza, o veza ma oa kalon pep hini glaharet diwar-benn o mibien hag o merhed : hogen David a lakaas e fiziañs en Aotrou, e Zoue.
7. Hag eñ a lavaras da Abiatar, ar Beleg-braz, mab Akimelek : Degas din an efod. Hag Abiatar a zegasas an efod da Zavid.
8. Ha David a houlennas kuzul digand an Aotrou, o lavaroud : Ha mond a rin-me war-lerh al laeron-ze ? Hag o hemeroud a rin-me, pe ne rin ket ? Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Kee war o lerh ; rag heb mar e kemerer anezo hag e tenni ar preiz euz o daouarn.
9. David eta a gerzas gand ar c'hweh-kant den a oa gantañ ; hag i a zeuas beteg froud Besor : hag hiniennou pere a oa skuiz a chomas eno.
10. Hogen David a yeas war o lerh ha pevar-hant den a oa chomet da ehana o veza ma oant skuiz, ha n'o-doa ket gellet mond en tu all da froud Besor,
11. Hag i a gavas eun Ejiptian en eur park hag a zegasas anezañ da Zavid : hag i a roas dezañ bara da zebri ha dour da eva,
12. Hag ivez lod euz a eur goñvor fiez³²⁸, ha daou bakad rezin seh. Pa en-doe hemañ debret, e teuas nerz dezañ, hag e wellaas dezañ : rag n'en-doa debret bara, nag evet dour, tri devez ha teri nozvez 'oa.
13. Ha David a lavaras dezañ : Da biou out-te ? Euz a beleh e teuez-te ? Peleh ez ez ? Hag eñ a lavaras : Me 'zo eur sklav euz an Ejipt, ha mevel on gand eun den euz a Amalek : va mestr en-deus va lezet amañ, o veza ma on kouezet klañv derhent-deh.
14. Rag ni on-eus greet eun argadenn war-zu ar hreisteiz euz ar Seretied, hag ouz Juda, hag ouz ar hreisteiz euz a Galeb : ha devet on-eus Siseleg.
15. Ha David a lavaras dezañ : Ha te a hellfe va has etrezeg ar vandenn dud-ze ? Hag eñ a lavaras : Tou din dre Zoue, penaoz n'am lazi ket, ha n'am likii ket etre daouarn va mestr, ha me az kaso etrezeg ar vandenn dud-ze. Ha David hen touas dezañ.
16. Ha pa en-doe hemañ kaset David di, setu an Amalekited a oa gourvezet war an douar tro-war-dro, o tebri hag oh eva, hag oh ober evel eul lid braz, en abeg d'ar preiz ha d'an diwisk o-doa greet e bro ar Filistined ha war douar Juda.
17. Ha David a drehas anezo adaleg ar pardaez beteg ar pardaez antronoz ; ha ne oe saveteet hini anezo, nemed pevar-hant den yaouank, pere a bignas war kañvaled hag a dehas.
18. David eta a gemeras kement o-doa kaset ganto an Amalekited ; hag e tennas e zious wreg euz o daouarn.
19. Ha ne oe kollet netra, na bihan, na braz, ken euz ar baotred, ken euz ar merhed, hag euz an diwisk : kement o-doa kemeret, David a zegasas anezo en-dro.
20. Hag eñ a gemeras an oll zeñved, hag an oll zaout, hag o lakaas da vond en e raog : hag an dud a lavare : Setu preiz David.

³²⁸ eur goñvor fiez : eur bern fiez.

21. Neuze David a zeuas etrezeg an daou-hant den, pere o veza bet skuiz, n'o-doa ket gellet e heulia, ha da bere en-doa kemennet chom e-harz froud Besor. Ar re-mañ a yeas war arbenn David hag ar bobl a oa gantañ. Ha David, o tostaad outo, a zaludas anezo heb beza droug ennañ.

22. Hogen kement den droug ha fallagr, euz ar re a oa eet gand David, a lavaras : Pa n'int ket deuet ganeom, ne roim netra dezo euz ar preiz on-eus kemeret : hogen ra vezo a-walh da bep hini kaoud e wreg hag e vugale : ha pa o-devezo bet anezo, eet kuit pep hini.

23. Hogen David a lavaras : Ne reot ket evel-se, va breudeur, e-keñver ar pezh en-deus roet an Aotrou deom, eñ pehini en-deus or miret hag en-deus lakaet etre on daouarn al laeron-ze pere o-doa greet eun argadenn warnom.

24. Den ebed ne zelaouo al lavar-ze ; rag kevatal e vezo ar rann d'ar re a zo bet en emgann, ha d'ar re a zo chomet gand pakadou : kement ha kement a vezo o lodennou.

25. Hag evel-se e oe greet en deiz-se, hag an dra-ze a oa bet reizet ha startaet abaoe, ha lakaet evel lezenn en Izrael bete-vremañ.

26. Pa zeuas David da Zizeleg, e kasas lod euz ar preiz da henaoued Juda pere a oa kerent-nes dezañ, o lavaroud : Kemerit ar vennoz³²⁹ euz a breiz enebourien an Aotrou.

27. Hag eñ a gasas ivez lod euz ar preiz d'ar re a oa e Betel, ha d'ar re a oa e Ramot war-zu ar hreisteiz, ha d'ar re a oa e Jeter,

28. Ha d'ar re a oa en Aroer, hag e Semafot, hag e Estamo,

29. Ha d'ar re a oa e Rac'hal, hag e kêriou Jerameel, hag e kêriou Seni,

30. Ha d'ar re a oa e Arama, hag e lagenn Asan, hag e Atach,

31. Ha d'ar re a oa e Hebron, ha d'ar re oll pere a oa el lehiou e pere e oa bet chomet David gand e dud.

XXXI. Pennad.

Saul hag e vibien a zo lazet.

1. Hogen ar Filistined a stourmas ouz Izrael : ha tud Izrael a dehas dirag ar Filistined, hag eul lod braz anezo a oe lazet war menez Gelboe.

2. Hag ar Filistined en em daolas war Saul ha war e vibien ; hag i a lazaz Jonatas, hag Abinadab, ha Melkima, mibien Saul.

3. Hag oll bouez an emgann a droas war Saul : hag ar waregerien a dizas anezañ, hag eñ a oe gloazet-braz gand ar waregerien.

4. Ha Saul a lavaras d'e floh : Dihouin da gleze ha laz ahanon, gand aon na zeufe ar re zieemwadet-se d'am laza ha da ober goap ahanon. Hogen e floh, spontet-braz, ne fellas ket dezañ hen ober : Saul eta a gemeras e gleze, hag en em daolas warnezañ.

5. Pa welas e floh penaoz e oa maro Saul, en em daolas ivez war e gleze e-unan hag e varvas gantañ.

6. Saul eta a varvas, hag e dri mab, hag e floh, ha kement den a oa gantañ en deiz-se.

7. Hogen pa welas tud Izrael, ar re a oa en tu all d'an draonienn, pe en tu all d'ar Jourdan, penaoz e oa tehet tud Izrael ha penaoz e oa maro Saul hag e vibien, e tilezjont o hêriou hag e tehjont : hag ar Filistined a zeuas hag a chomas eno.

³²⁹ ar vennoz : ? eun darn.

8. Antronoz, pa zeuas ar Filistined evid diwiska ar re a oa bet lazet, e kavjont Saul hag e dri mab gourvezet war menez Gelboe.

9. Hag i a drohas penn Saul, hag a gemeras e armou digantañ : hag i a gasas dre oll vro ar Filistined, evid embanna kement-se e templ an idolou hag e-touez ar bobl.

10. Lakaad a rejont armou Saul e templ Astarot, hag e krogjont e gorv ouz mur Betsan.

11. Pa glevas tud Jabez-Galaad ar pezh o-doa greet ar Filistined da Zaul,

12. Ar re galoneka anezo a zavas hag a gerzas 'hed an noz, hag a gemeras korv maro Saul ha korvou maro e vibien, a oa ouz mur Betsan ; hag i a zeuas da Jabez-Galaad hag o loskas eno.

13. Hag i a gemeras o eskern, hag a vezias anezo e koad Jabez, hag a yunas e-pad seiz devez.

EIL LEVR SAMUEL

a halvom

EIL LEVR AR ROUEED

Pennad

David o ouela diwar-benn maro Saul ha Jonatas.

1. Goude ma oe maro Saul, ha goude beza trehet Amalek, David a chomas e Siseleg e-pad daou zevez.
2. Hogen an trede deiz e oe gwelet eun den pehini a zeue euz a gamp Saul : roget e oa e zillad, hag e benn a oa goloet a boultr : ha pa dostaas ouz David, en em daolas war e henou, hag eh azeulas.
3. Ha David a lavaras dezañ : A beleh e teuez ? Hag eñ a lavaras dezañ : Euz a gamp Izrael on tehet.
4. Ha David a lavaras dezañ : Petra a zo c'hoarvezet ? Lavar se din. Hag eñ a lavaras : Tehet eo ar bobl euz an emgann, ha kalz anezo a zo kouezet hag a zo maro ; ha Saul ha Jonatas e vab a zo bet lazet.
5. Ha David a lavaras d'an den yaouank kement-se dezañ : A beleh e ouezez-te penaoz eo maro Saul ha Jonatas e vab ?
6. Hag ar paotr yaouank pehini a zegase ar helou, a lavaras : Deuet on dre zarvoud war menez Gelboe, ha Saul a oa en em daolet war e hoaf : hag evel ma tostae kirri ha marheien,
7. Eñ o selloud a-dreñv, am gwelas ha a halv ashanon. Ha pa em-boe lavaret dezañ : Setu-me,
8. E lavaras din : Piou out-te ? Ha me a lavaras dezañ : Amalekit on.
9. Hag eñ a lavaras din : Sao warnon ha laz ashanon ; rag krog eo an ankou ennon, ha beo-buhezeg on c'hoaz.
10. Hag o sevel warnezañ, em-euz e lazet ; rag me a ouie penaoz ne helle ket beva goude e ziskar. Ha tennet em-eus an dalgenn a oa war e benn, hag al lagadenn a oa en e vreh, hag em-eus o degaset dit amañ, o ! va aotrou.
11. Setu David a gemeras e zillad hag o rogas, hag ar re oll a oa gantañ a reas eveltañ.
12. Hag i a leñvas, hag a ouelas, hag a yunas beteg ar pardaez diwar-benn Saul, ha diwar-benn Jonatas e vab, ha diwar-benn pobl an Aotrou, ha diwar-benn ti Izrael, o veza ma oant bet skoet gand ar hleze.
13. Ha David a lavaras d'ar paotr yaouank pehini en-doa degaset ar helou dezañ : A beleh out-te ? Hag eñ a lavaras : Mab eun diavêziad, eun Amalekit on.
14. Ha David a lavaras dezañ : Penaoz n'eh-eus-te ket bet a aon o lakaad da zorn war eouliet an Aotrou evid e laza ?
15. Ha David a halv ashanon euz e baotred hag a lavaras dezañ : Tosta hag en em daol war hennez. Hemañ a skoas gantañ hag eñ a varvas.

16. Ha David a lavaras dezañ :Da wad a gouezo war da benn da-unan ; rag da henou da-unan en-deus komzet en da eneb, o lavaroud : Me em-eus lazet eouliet an Aotrou.
17. Hogen David a reas ar ganaouenn geinvanuz-mañ diwar-benn Saul, ha Jonatas e vab ;
18. (Hag eñ a hourhemennas e vije desket mibien Juda da denna gand ar wareg evel ma eo skrivet e levr ar re wirion), hag eñ a lavaras : Evesa, Izrael, piou eo ar re a zo maro war da lehiou uhel, goude beza bet gloazet.
19. Ar re vrudeta, o ! Izrael, a zo bet lazet war da veneziou : penaoz eo bet kouezet ar re greñv ?
20. Na roit ket da anaoud ar helou-ze e Ged, n'o roit ket da anaoud e gwileroù Askalon, gand aon na zeufe da laouennaad merhed ar Filistined, ha na zeufe da fougea merhed ar re ziemwadet.
21. Meneziou Gelboe, na zeuet warnoh na gliz na glao ; na vezet ket breveudi en ho parkou : rag eno eo bet taolet tirenn ar re galoneg, tirenn Saul, evel pa ne ve ket bet eouliet gand eoul santel.
22. Biskoaz n'eo bet distroet saez Jonatas euz a wad ar re lazet, nag a lard ar re galoneg ; ha kleze Saul n'eo ket distroet en aner.
23. Saul ha Jonatas a oa karadeg-braz ha leun a veurdez e-hed o buhez ; ha n'int ket bet rannet en o maro ; skañvoh e oant eged an ered, ha kreñvoh eged al leoned.
24. Merhed Izrael, gouelit war Saul pehini a wiske ahanoh gand tane e-kreiz an dudiou, pehini a roe deoh dillad aour evid en em ginkla.
25. Penaoz ef-eñ bet kouezet³³⁰ ar re greñv er stourm ? Jonatas a zo bet lazet war da veneziou.
26. En em zoania a ran warnout, Jonatas, va breur, te pehini a oa kaer ha karadeg dreist karantez ar merhed. Me az kare evel ma kar eur vamm he mab pennher.
27. Penaoz ef-eñ kouezet ar re greñv, hag ef-eñ bet kollet armou ar brezel ?

II.Pennad.

David a zo lakaet da roue war Juda, hag Isboset, mab Saul, war Izrael.

1. Goude-ze David a houlennas kuzul digand an Aotrou, o lavaroud : Ha pigna a rin-me da unan euz a gêriou Juda ? Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Pign. Ha David a lavaras : Da beleh e pignin ? Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Da Hebron.
2. David eta a bignas di, gand e ziou wreg, Ac'hinoam euz a Jezrael, hag Abigail, gwreg Nabal euz ar Harmel.
3. David a gasas ivez di ar re a oa gantañ, pep hini gand e dud : hag i a chomas e kêriou Hebron.
4. Ha tud Juda a zeuas hag a eoulias eno David evid ma renje war ti Juda. Ha roet e oe da anaoud da Zavid penaoz tud Jabez-Galaad o-doa beziet Saul.
5. Ha David a gasas kannaded etrezeg tud Jabez-Galaad hag a lavaras dezo : Benniget ra viot gand an Aotrou, c'hwi pere hoh-eus greet an drugarez-se e-keñver hoh aotrou Saul, hag hoh-eus e veziet.
6. Ha bremañ an Aotrou a roy deoh trugarez ha gwirionez : ha me ivez a roy gopr deoh, o veza ma hoh-eus greet kement-se.

³³⁰ ef-eñ bet kouezet : eo bet eñ kouezet.

7. Ra vezo kreñv ho taouarn, ha bezit tud kaloneg : rag petra bennag ma eo maro Saul, hoh aotrou, koulskoude ti Juda en-deus va eouliet da roue dezañ.
8. Hogen Abner, priñs arme Saul, a gemeras Isboset, mab Saul, hag a gasas anezañ tro-war-dro d'ar hamp,
9. Hag a lakaas anezañ da roue war Halaad, ha war C'hesuri , ha war Jezrael, ha war Efraim, ha war Benjamin, ha war Izrael oll.
10. Daou-ugent vloaz en-doa Isboset, mab Saul, pa zeuas da rena war Izrael ; hag eñ a renas daou vloaz. Hogen ti Juda hepken a heulie David.
11. Hag an niver euz an deiziou e-pad pere e chomas David e Hebron, hag e renas war ti Juda, a oe euz a zeiz vloaz ha c'hweh miz.
12. Neuze Abner, mab Ner, ha tud Isboset, mab Saul, a zeuas euz ar hamp da Habaon.
13. Hogen Joab, mab Sarvia, ha tud David a yeas er-mêz hag a gavas anezo e-harz lenn Gabaon. Ha pa oe tost an eil arme d'egile, eh azezjont o hamp an eil dirag egile, lod en tu-mañ euz al lenn, ha lod all en tu all.
14. Hag Abner a lavaras da Joab : Ra zavo da baotred, ha ra hoariint dirazom. Ha Joab a lavaras : Ra zavint.
15. Sevel a rejont eta ; hag e tremenas daouzeg euz a Venjamin, euz a du Isboset, mab Saul, ha daouzeg euz a baotred David.
16. Ha pep hini o veza kroget e penn e geñverer, a lakaas e gleze e korv e enebour, hag e kouezjont oll : hag al leh-se a oe anvet, park ar re galoneg e Gabaon.
17. Hag eur stourm kaled a zavas en deiz-se : hag Abner ha tud Izrael a dehas dirag tud David.
18. Tri mab Sarvia, Joab, hag Abisai, hag Asael, a oa eno : hogen Asael a oa eur reder braz ; heñvel e oa ouz ar yourhed a zo er hoajou.
19. Asael a yeas war-lerh Abner, ha ne zistroas nag a-zehou nag a-gleiz, ha bepred edo war e lerh.
20. Abner o veza sellet a-dreñv a lavaras : Ha te eo Asael ? Hag eñ a lavaras : Me eo.
21. Hag Abner a lavaras dezañ : Kee a-zehou pe a-gleiz, ha pak unan euz ar baotred, ha kemer e ziwiskou. Hogen Asael ne fellas ket dezañ ehana da vond war e lerh.
22. Abner a gomzas c'hoaz ouz Asael, o lavaroud : En em denn, ha na zeu mui war va lerh, gand aon na ve red din da doulla gand va goaf ; ha ne hellin mui sevel va daoulagad dirag Joab da vreur.
23. Asael ne zelaouas ket anezañ ha ne fellas ket dezañ distrei. Neuze Abner a skoas gantañ gand kil e hoaf hag a doullas pleg e vorzed ; hag eñ a varvas war al leh : ha kement hini a dremene dre al leh-se, e pehini e oa bet kouezet ha marvet Asael, a chome a-zav.
24. Hogen endra ma'z ee Joab hag Abisai war-lerh Abner pehini a dehe, e kuzas an heol pa zeujont da greh ar zan dour, pehini a zo rag-eneb d'an draonienn, war hent distro Gabaon.
25. Mibien Benjamin en em zastumas en-dro da Abner : hag o veza bet greet eur bagad ganto, e chomjont war lein eur grehenn.
26. Neuze Abner a grias ouz Joab hag a lavaras dezañ : Ha da gleze a dle laza beteg an diweza ? Ha ne ouzout-te ket penaoz ez eo riskluz lakaad da oll fiziañs ? Beteg pegeid ne zeski ket d'ar bobl ehana da vond war-lerh he breudeur ?
27. Ha Joab a lavaras : Evel ma eo beo an Aotrou, ma ez-pije komzet, ar bobl he-divije ehanet adaleg ar mintin da vond war-lerh he breudeur.
28. Joab eta a zonas gand ar horn-boud, hag an oll arme a chomas, hag a ehanas da vond war-lerh Izrael, ha da stourmi outañ.
29. Hogen Abner hag e dud a gerzas a-dreuz d'ar menezioù e-pad an noz-se : hag i a dreuzas ar Jourdan, hag o veza tremenet dre oll Vethoron, e tistrojont d'o hamp.

30. Hogen Joab o veza distroet, goude beza lezet Abner da vond, a zastumas an oll bobl : hag e oe kavet a-nebeutoh e-touez tud David, naonteg den, heb niveri Asael.
31. Hogen tud David a skoas euz a Venjamin, hag euz ar re a oa gand Abner, tri-hant ha tri-ugent, pere a oe lazet.
32. Hag i a gemeras Asael, hag a vezias anezañ e bez e dad e Betlehem : ha Joab hag e dud goude beza kerzet a-hed an noz, a zeuas da Hebron da houlou-deiz.

III. Pennad.

Izrael en em ro da Zavid.

1. Eur brezel hir a oe eta etre ti Saul ha ti David : ha David o vond bepred a-raog, hag oh en em greñvaad muioh-oh-vui, ha ti Saul o koaza a zeiz -e-deiz.
2. Ha mibien a oe ganet da Zavid e Hebron : hag ar henta-ganet a oe Amnon, euz a Ac'hinoam ar Jezraelitez.
3. Ha goude hemañ Keleab, euz a Abigail, gwreg Nabal euz ar Harmel : hag an trede Absalom, mab Maac'ha, merh Tolmai, roue Gesur.
4. Hag ar pevare Adonias, mab Haggit : hag ar pempved Safatia, mab Abital.
5. Hag ar c'hwehved Jetraam, euz a Eglá, gwreg David. Ar re-ze a zo bet ganet da Zavid e Hebron.
6. Endra eta edo brezel etre ti Saul ha ti David, Abner, mab Ner, a oa e penn ti Saul.
7. Hogen Saul en-doa bet eur zerh anvet Resfa, merh Aia. Hag Isboset a lavaras da Abner :
8. Perag out-te bet o kaoud serh va zad ? Hag hemañ heget-braz gand geriou Isobet, a lavaras : Hag eur hi on, me pehini a zo savet hirio a-eneb Juda, me pehini em-eus greet trugarez e-keñver ti Saul, da dad, hag e-keñver da vreudeur ha da gerentnes, me pehini n'em-eus ket da lakaet etre daouarn David ; ha te a zeu hirio d'am heskina en abeg da eur vaouez ?
9. Ra ray Doue kement-se hag ohpenn da Abner, ma ne ran ket e-keñver David evel ma en-deus touet an Aotrou diwar e benn ;
10. O lakaad ar rouantelez da vond kuit euz a di Saul, hag o sevel tron David war Izrael ha war Juda adaleg Dan beteg Bersabee.
11. Hag Isboset ne gredas lavaroud netra dezañ, o veza m'en-doa aon razañ.
12. Abner eta a gasas kannaded da Zavid evid lavaroud dezañ euz e berz : Da biou eo ar vro-ze ? Hag evid lavaroud c'hoaz : Gra kevredigez ganen, ha va dorn a vezo ganez, hag e tegasin oll Izrael etrezeg ennout.
13. Ha David a lavaras : Ervad, me a ray kevredigez ganez ; hogen eun dra houlennan diganez, o lavaroud : Ne weli ket ahanon ken n'az-pezo degaset din Michol, merh Saul. Goude-ze e teui hag e weli ahanon.
14. Hogen David a gasas kannaded da Isboset, mab Saul, o lavaroud : Distaol din Michol, va gwreg, gand pehini on dimezet, evid kant pod-mezenn Filistined.
15. Isboset eta a gasas hag a dennas anezi diouz heh ozah Faltiel, mab Lais.
16. Heh ozah a yeas war he lerh en eur ouela beteg Baturim, hag Abner a lavaras dezañ : Kee, ha distro. Hag eñ a zistroas.
17. Neuze Abner a gomzas ouz henaoured Izrael, o lavaroud : Pell 'zo e klaskit David da roue warnoh.

18. Grit hen eta bremañ, pa eo gwir penaoz en-deus komzet an Aotrou ouz David, o lavaroud : Dre zorn David, va zervijer, e tennin va fobl a Izrael euz a zaouarn ar Filistined, hag heh oll enebourien.

19. Abner a gomzas ivez ouz Benjamin. Hag eñ a yeas da Hebron evid lavaroud da Zavid kement a oa bet kavet mad gand Izrael ha gand Benjamin oll.

20. Dond a reas eta da gavoud David e Hebron, hag ugent den gantañ. Ha David a reas eur banvez da Abner ha d'ar re a oa gantañ.

21. Hag Abner a lavaras da Zavid : Sevel a rin hag e strollin Izrael oll etrezeg te, va aotrou ha va roue ; ha me a ray kevredigez ganez, hag e reni warnezo oll, evel ma hoanta da galon. Hogen pa en-doe David diambrouget Abner, ha goude ma oe eet hemañ e peoh,

22. E teuas raktal tud David gand Joab, goude beza lazet laeron, hag eñ a zegase gantañ eur preiz braz. Hogen Abner ne oa mui gand David e Hebron, o veza ma oa bet diambrouget gantañ, ha ma oa eet kuit e peoh.

23. Ha Joab, gand an oll arme a oa gantañ, a zeuas goude-ze : ha lavaret e oe dezañ penaoz Abner, mab Ner, a oa deuet da gavoud ar roue, penaoz en-doa ar roue e ziambrouget, ha ma oa eet kuit e peoh.

24. Ha Joab a yeas da gavoud ar roue, hag a lavaras dezañ : Petra eh-eus-te greet ? Setu Abner a zo bet deuet d'az kavoud. Perag eh-eus-te e gaset kuit, hag e lezet da vond ?

25. Ha ne anavezet-te ket Abner, mab Ner : ha ne ouezet-te ket penaoz n'eo deuet d'az kavoud nemed evid da douella, evid anaoud da zoareou, ha gouzoud petra a rez ?

26. Ha Joab o veza eet kuit diod David, a gasas kannaded war-lerh Abner, ha a lakaas anezañ da zistrei euz a buñs seh Sira, heb gouzoud da Zavid.

27. Ha pa oe distroet Abner da Hebron, Joab a zedennas anezañ da greiz ar porz evid komza outañ gand touellerez : hag eñ a skoas gantañ e pleg e vorzed ; hag hemañ a varvas evid veñji gwad Asael, breur Joab.

28. Pa glevas David ar pez a oa c'hoarvezet, e lavaras : Dinamm on ha va rouantelez ivez dirag an Aotrou da viken, euz a wad Abner, mab Ner :

29. Ha ra gouezo war penn Joab, ha war oll di e dad : ha ra vezo bepred e ti Joab tud pere o-devezo red sper, tud lovr, tud pere a zalho ar werzid³³¹, tud pere a gouezo dindan ar hleze, tud pere o-devezo dienez a vara.

30. Joab eta hag Abisai e vreur a lazas Abner, o veza m'en-doa hemañ lazet Asael o breur e Gabaon en emgann.

31. Hogen David a lavaras da Joab ha d'an oll bobl a oa gantañ : Rogit ho tillad, ha goloit ho penn gand seier ha leñvit e-raog kañv Abner : hag ar roue David a yee war-lerh an arched.

32. Ha pa o-doe beziet Abner e Hebron, ar roue David a zavas e vouez en eur ouela war bez Abner : an oll bobl a ouelas ivez.

33. Hag ar roue o leñva hag o ouela Abner, a lavaras : N'eo ket maro Abner evel ma varv ar re zigalon.

34. Da zaouarn n'int ket bet ereet, ha da dreid n'int ket bet karget a speviou : hogen kouezet out evel ma kouez eur re dirag mibien ar fallagriez. Hag an oll bobl en em unanas evid gouela dezañ.

35. Ha pa zeuas an oll bobl da zebri boued gand David, pa edo c'hoaz deiz braz, e touas David, o lavaroud : Ra ray Doue kement-se din, ha c'hoaz ohpenn, mar tañvaan bara, pe netra all, a-barz ma vezo kuzet an heol.

³³¹ ar werzid : eur vaz.

36. Hag an oll bobl a glevas : ha kement en-doa greet ar roue dirag an oll bobl, a oe kavet mad ganti.

37. Hag an oll bobl, hag Izrael oll, a ouezas en deiz-se penaoz ne oa ket ar roue en-doa lakaet laza Abner, mab Ner.

38. Ar roue a lavaras ivez d'e zervijerien : Ha ne ouezit-hu penaoz eo³³² kouezet hirio eur priñs, hag eur priñs ar brasa en Izrael ?

39. Hogen me a zo c'hoaz gwan, ha roue eouliet hepken. Hag an dud-mañ, mibien Sarvia, a zo re galed evidon. Ha ra zistaolio an Aotrou da neb a ray droug, dioh e zrougiez.

IV. Pennad.

Isboset a zo lazet.

1. Hogen Isboset, mab Saul, a glevas penaoz e oa bet lazet Abner e Hebron : hag eñ a gollas kalon, hag Izrael oll a oe trubuillet.

2. Hogen bez' e oa gand mab Saul daou zen, priñsed al laeron, unan anvet Baana hag egile Rec'hab, mibien Remmon euz a Verot, euz a vreuriez Benjamin ; rag Berot a zo bet gwechall sellet evel euz a Venjamin.

3. Ha tud Berot a dehas da Hetaim, hag a zo chomet eno evel diavêzidi betevremañ.

4. Hogen Jonatas, mab Saul, en-doa eur mab pehini a oa mahagnet en e dreid : rah pemp bloaz hepken en-doa, pa zeuas ar helou euz a Jezarel diwar-benn maro Saul ha Jonatas : hag e vagerez o kemeroud anezañ, a dehas ; hag evel ma haste-hi o tehoud, e kouezas-eñ hag e teuas da veza kamm. Hag e oe roet dezañ al lesano a Vifiboset.

5. Rec'hab ha Baana, mibien Remmon euz a Verot, a zeuas hag a yeas e ti Isboset e-pad ar wrez euz an deiz : hag hemañ a oa kousket war e wele war-zu kreisteiz. Hag ar borzierenz a oa kousket ivez o nêtaad ar gwiziz.

6. Mond a rejont eta en ti oh en em guza hag o kemeroud pennou ed, hag i a skoas gantañ e pleg e vorzed ; ha Rec'hab ha Baana e vreur a dehas kuit.

7. Pa'z ejont en ti, e kouske-eñ war e wele en e gambr, hag i e lazaz : hag o veza kemeret e benn, e kerzjont 'hed an noz dre hent an distro.

8. Hag i a zegasas penn Isboset da Zavid e Hebron, hag e leverjont d'ar roue : Setu penn Isboset, mab Saul, da enebour, pehini a glaske da vuhez, hag an Aotrou en-deus roet hirio d'an aotrou va roue veñjañs euz a Zaul hag euz e ouenn.

9. Hogen David a lavaras da Rec'hab ha da Vaana e vreur, mibien Remmon euz a Verot : Evel ma eo beo an Aotrou, pehini en-deus tennet va ene euz a beb anken,

10. Ma em-eus dalhet ha lazet e Siseleg, an hini pehini a roas da anaoud din penaoz e oa maro Saul, eñ pehini a grede dezañ e roe eur helou mad, hag e oa dleet gopr dezañ evid e gelou ;

11. Seul-vui bremañ, pa o-deus tud fallagr lazet eun den dinamm, en e di, war e wele, e veñjin e wad war ho taouarn-hu hag e tennin ahanoh diwar an douar.

12. David eta a hourhemennas d'e baotred, hag i a lazaz ar re-mañ : ha goude beza trohet o daouarn hag o zreid, e krogjont anezo e-tal lenn Hebron. Hogen kemeroud a rejont penn Isboset, hag e vezjont anezañ e bez Abner e Hebron.

³³² eo : ez eus.

V.Pennad.

David a zo lakaet da roue war Izrael oll.

1. Neuze oll vreuriezhou Izrael a zeuas da gavoud David e Hebron, hag a lavaras dezañ : Setu ni a zo da eskern ha da gig.
2. Pell 'zo, pa edo Saul da roue warnom, te a gase hag a zegase Izrael. Hogen an Aotrou a lavaras dit : Te a vezo pastor va fobl a Izrael, ha te a vo mestr war Izrael.
3. Henaoured Izrael a zeuas ivez da gavoud ar roue e Hebron ; hag ar roue David a reas kevredigez ganto e Hebron dirag an Aotrou ; hag i a eoulias David da roue war Izrael.
4. Tregont vloaz en-doa David pa zeuas da reni ; hag eñ a renas daou-ugent vloaz.
5. Seiz vloaz ha c'hweh miz e renas e Hebron war Juda ; hag e Jeruzalem e renas tri bloaz ha tregont war oll Izrael ha Juda.
6. Hag ar roue, gand an dud a oa gantañ, a yeas etrezeg Jeruzalem, e peleh e chome ar Jebuseed. Hag ar re-mañ a lavaras da Zavid : Ne zeui ket amañ, ken n'az-pezo kaset kuit ar re zall hag ar re gamm ; evid lavaroud : Ne zeuio ket David amañ.
7. Hogen David a gemeras kreñv Sion, a zo ivez kêr David.
8. Rag David en-doa kinniget eur gopr evid an hini a drehfe ar Jebuseed, hag a dizje lein ar hreñv hag a gasje kuit ar re zall hag ar re gamm, pere o-doa kas ouz David. Rag-se e leverer gand eul lavar-goloet : An hini a zo dall hag an hini a zo kamm ne daint ket en templ.
9. David a yeas da chom er hreñv, hag a halvas anezañ kêr David : hag eñ a lakaas sevel tiez tro-war-dro, adaleg Mello hag en diabarz.
10. Ha David a yee bepred a-raog hag en eur greski, hag an Aotrou, Doue an armeou, a oa gantañ.
11. Neuze Hiram, roue Tir, a gasas kannaded da Zavid, gand koad sedr, ha kilvizien, ha benerien-vein evid ar mogerioù : hag i a zavas ti David.
12. Ha David a anavezaz penaoz en-doa an Aotrou e greteet da roue war Izrael, ha penaoz en-doa savet e rouantelez war e bobl a Izrael.
13. Ha David a gemeras c'hoaz serhed ha gwragez euz a Jeruzalem, goude ma oe deuet euz a Hebron : ha genel a rejont da Zavid mibien all ha merehd all.
14. Ha setu amañ anoioù a re a zo bet ganet dezañ e Jeruzalem : Samua, ha Sobab, ha Natan, ha Salomon.
15. Ha Jehabar, hag Elisua, ha Nefeg,
16. Ha Jafia, hag Elisama, hag Elioda, hag Elifalet.
17. Pa glevas ar Filistined penaoz e oa bet eouliet David da roue war Izrael, e pignjont oll evid klaskoud David : ha pa glevas David kement-se, e tiskennas er hreñv.
18. Hogen ar Filistined a zeuas hag en em skignas dre draonienn Rafaim.
19. Ha David a houlennas kuzul digand an Aotrou, o lavaroud : Ha pigna a rin-me a-eneb ar Filistined ? Hag o lakaad a ri-te etre va daouarn ? Hag an Aotrou a lavaras da Zavid : Pign, rag me a lakay ar Filistined etre da zaouarn.
20. David a zeuas eta da Vall-Farasim : hag eñ o zrehas eno, hag a lavaras : Skignet eo gand an Aotrou va enebourien, evel ma eo skignet an doureier. Rag eo e oe galvet al leh-se, Baal-Farasim.
21. Hag i a lezas eno o idolou ; ha David hag e dud o hasas ganto.
22. Ar Filistined a zeuas hag a bignas adarre, hag en em skignas dre draonienn Rafaim.

23. Ha David a houlennas kuzul digand an Aotrou, o lavaroud : Ha pigna a rin-me a-eneb ar Filistined ? Hag o lakaad a ri-te etre va daouarn ? Hag an Aotrou a lavaras : Na bign ket outo, hogen tro-war-dro dezo, ken na vezi deuet rag-eneb d'ar gwez-per.

24. Ha pa glevi evel trouz eur re o kerzoud war beg ar gwez-per, neuze ez i d'an emgann : rag neuze an Aotrou a gerzo en da raog, evdid skei war gamp ar Filistined.

25. David a reas eta evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet dezañ ; hag eñ a drehas ar Filistined, adaleg Gabaa, beteg ma'z eer da Hezer.

VI. Pennad.

David a zañs a-raog an arh.

1. David a zastumas adarre an dud dibab euz a Izrael ; ha tregont mil a oa anezo.
2. Ha David a zavas hag a yeas gand an oll bobl euz a dud Juda a oa gantañ, evid degas arh Doue, war behini eo galvet ano Aotrou an armeou, pehini a zo azezet dreisti war ar jerubined.
3. Hga i a lakaas arh Doue war eur harr nevez, hag e tegasjont anezi euz a di Abinadab a Habaa : hogen Oza hag Abio, mibien Abinadab, a vlenie ar harr nevez.
4. Ha pa o-doe he zennet euz a di Abinadab euz a Habaa, Ahio a vlenias arh Doue o vale en he raog.
5. Ha David hag oll bobl a Izrael a hoarie dirag an Aotrou gand kalz a vinviou koad, gand telennou, ha lirennoù, ha taboulinou, ha sistrou, ha simbalou.
6. Hogen pa oent da leur Nac'hon, Oza a astennas e zorn ouz arh Doue, hag a viras outi na gouezfe ; rag an ejenned a winke hag he lakae da gostezi.
7. Droug a zavas en Aotrou a-eneb Oza, hag eñ a skoas gantañ en abeg d'o herrder ; hag Oza varvas eno e-tal arh Doue.
8. Glaharet e oe David, o veza ma oa bet skoet Oza gand an Aotrou : hag al leh-se a zo bet galvet Kastiz Oza, beteg henn.
9. Ha David en-doa eun aon vraz rag an Aotrou en deiz-se, hag a lavaras : Penaoz e teuy arh an Aotrou em zi ?
10. Ha ne fellas ket dezañ e vije kaset arh an Aotrou d'e di e kêr David : hogen lakaad a reas he has da di Obédedom euz a Het.
11. Hag arh an Aotrou a chomas e ti a-hed tri miz³³³ ; hag an Aotrou a vennigas Obédedom hag e oll di.
12. Neuze e oe roet da anaoud d'ar roue David penaoz en-doa an Aotrou benniget Obédedom ha kement en-doa, en abeg da arh Doue. David eta a yeas hag a zegasas arh Doue euz a di Obédedom da gêr David gand levez : ha David en-doa gantañ seiz bagad barzed, hag eul leue evid viktim.
13. Ha pa o-doa greet ar re a zouge arh an Aotrou c'hweh kammed, eñ a ginnige eun ejenn hag eun tourh.
14. Ha David a zañse kement ha ma helle dirag an Aotrou, goude beza lakaet eun efod lin war e gein.
15. Evel-se David hag oll di Izrael a zouge arh kevredigez an Aotrou gand levez ha gand son ar herniel-boud.
16. Ha pa oe deuet arh an Aotrou e kêr David, Michol, merh Saul, pehini a zelle dre eur prenest, a welas ar roue David o tañsa hag o lammoud dirag an Aotrou ; hag hi a reas goap anezañ en he halon.

³³³ a-hed tri miz : chom a reas an arh eno e-pad tri miz.

17. Hag ar re-mañ a zegasas e-barz arh an Aotrou, hag a lakaas anezi en he leh e-kreiz an telt en-doa stegnet David eviti : ha David a ginnigas sakrifisou-losk ha sakrifisou a beoh dirag an Aotrou.

18. Ha pa en-doe peurginniget ar skarifisou-losk hag ar sakrifisou a beoh, e vennigas ar bobl e ano Aotrou an armeou.

19. Hag eñ a roas da oll bobl Izrael, ken d'ar wazed, ken d'ar merhed, da bep hini, eun dorz vara, hag eun tamm kig bevin rostet, hag eur gouign poazet gand eoul. Hag an oll bobl a yeas kuit, pep hini d'e di.

20. Neuze David a zistroas evid bennizien e di : ha Michol, merh Saul, o veza deuet da ziambrouga David, a lavaras dezañ : Pebez gloar a zo bet hirio evid roue Izrael, oh en em zizolei dirag mitizien e zervijerien, hag oh en em ziskoueza en noaz evel eur farouel !

21. Ha David a lavaras da Vichol : Dirag an Aotrou pehini en-deus va dilennet kentoh eged da dad hag e oll di, ha pehini en-deus gourhemennet din ma vijen da benn war bobl an Aotrou e Izrael,

22. E c'hoariin hag e teuin da veza disterroh eged n'on bet : hag e vezin uvel dirag va daoulagad : ha mui a hloar am-bezo dirag ar mitizien a bere eh-eus komzet din.

23. Rag-se, Michol, merh Saul, n'he-doe mab ebed beteg deiz he maro.

VII. Pennad.

David a fell dezañ sevel eun templ d'an Aotrou :

hogen Doue a ro da anaoud dezañ penaoz e vezo savet gand e vab.

1. Pa oe azezet ar roue en e di, ha pa en-doe roet an Aotrou ar peoh dezañ a bep tu a-berz e enebourien,

2. Eñ a lavaras d'ar profed Natan : Ne welez ket et penaoz e choman en eun ti sedr, ha penaoz eo lakaet arh Doue e-kreiz ar hrehin³³⁴ ?

3. Ha Natan a lavaras d'ar roue : Kee, gra kement a zo en da galon ; rag an Aotrou a zo ganez.

4. Hogen en noz-se e komzas an Aotrou ouz Natan, o lavaroud :

5. Kee, ha lavar da Zavid, va zervijer : Setu petra a lavar an Aotrou : Ha te a zavo eun ti din evid ma chomin ennañ ?

6. Rag n'on chomet e ti ebed abaoe an deiz e pehini em-eus tennet bugale Izrael euz a zouar an Ejipt, beteg an deiz-mañ : hogen kerzet em-eus bepred dindan eun tabernakl hag eun telt.

7. En oll lehiou dre bere on tremenet gand oll vugale Izrael, ha lavaret em-eus-me da hini euz ar re da bere em-eus gourhemennet paska va fobl Izrael : Perag n'hoh-eus-hu ket savet din eun ti sedr ?

8. Ha bremañ e liviri da Zavid, va zervijer : Setu petra a lavar Aotrou an armeou : Da dennet em-eus euz ar peurvanou pa'z ees war-lerh al loened, evid da lakaad e penn va fobl Izrael.

9. Bet on ganez e pe leh bennag ma eh-eus kerzet, lazet em-eus da oll enebourien dirazout, lakaet em-eus da ano da veza braz evel ano ar re vrasa war an douar.

10. Lakaad a rin va fobl Izrael en eul leh ; he flanta a rin, hag hi a chomo eno, ha ne vezo mui keflusket : ha bugale ar fallagriez ne hlaharint mui anezi evel kent,

³³⁴ ar hrehin : ? Marteze "an telt".

11. Abaoe an deiz e pehini em-eus lakaet barnerien war va fobl Izrael : ha me a roy dit an ehan a-berz da oll enebourien : hag an Aotrou a ziougan dit penaoz e ray eun ti dit.

12. Ha pa vezo eet da zeiziou da benn, hag e kouski gand da dadou, me a lakay da zewel da ouenn en da houde, pehini a zeuy euz da askre, ha me a stardo e rouantelez.

13. Eñ eo a zavo eun ti d'am ano, ha me a stardo tron e rouantelez da viken.

14. Me a vezo tad dezañ, hag eñ a vezo mab din. Mar gra droug ebed, me a gastizo anezañ gand gwialenn an dud, ha gand gouliou bugale an dud.

15. Hogen ne dennin ket va zrugarez dioutañ, evel ma em-eus he zennet dioh Saul, pehini em-eus kaset kuit a-zirag va daoulagad.

16. Da di a vezo feal, ha da rouantelez ivez da viken dirazout, ha da dron a vezo stard evid biskoaz³³⁵.

17. Hervez an oll gomziou-ze, hag hervez an oll weledigez-se, e komzas Natan ouz David.

18. Hogen ar roue David a yeas e-barz hag a azezas dirag an Aotrou, hag a lavaras : Piou on-me, Aotrou Doue, ha petra eo va zi, evid beza va haset beteg amañ ?

19. Hogen kement-se a zo bet nebeud dirazout, Aotrou Doue, ma n'az-pije komzet ivez euz a di da zervijer evid pell amzer : rag hounnez eo lezenn Adam, Aotrou Doue.

20. Rag petra a hello David lavaroud ohpenn dit ? Ha te a anavez da zervijer, Aotrou Doue.

21. Hervez da her hag hervez da galon, eh-eus greet an oll draou braz-se ; hag eh-eus o roet da anaoud d'az servijer.

22. Diskouezet eh-eus eta da veurded, Aotrou Doue, rag n'eus hini heñvel ouzit, ha n'eus Doue all nemedout, e kement on-eus klevet dre on diskouarn.

23. Ha bez' ez eus war an douar eur vroad evel da bobl Izrael, evid pehini eo deuet Doue evid he lakaad da bobl dezañ e-unan, ha lakaad eun ano kaer dezi, oh ober burzudou braz evid o mad, ha traou spontuz dirag da bobl eh-eus tennet dit euz an Ejipt, evid koueza war ar vro-ze, war he fobl ha war he roue ?

24. Rag stardet eh-eus dit da bobl Izrael da viken : ha te, Aotrou Doue, a zo deuet da Zoue dezo.

25. Bremañ eta, Aotrou Doue, seven da viken ar ger eh-eus lavaret diwar-benn da zervijer, ha diwar-benn e di : ha gra evel ma eh-eus lavaret ;

26. Evid ma vezo meulet da ano da vepred, ha ma vezo lavaret : Aotrou an armeou a zo Doue war Izrael : ha ti David, da zervijer, a vezo stard dirag an Aotrou ;

27. Rag te, Aotrou an armeou, Doue Izrael, eh-eus e roet da anaoud da skouarn da zervijer, o lavaroud : Eun ti a zavin dit : rag-se en-deus kavet da zervijer e galon evid ober dit ar bedenn-mañ.

28. Bremañ, Aotrou Doue, te a zo Doue, ha da gomziou a vezo gwir ; rag te eo eh-eus lavaret an traou mad-se d'az servijer.

29. Deraou eta, ha bennig ti da zervijer, evid ma vezo da viken dirazout : rag te, Aotrou Doue, eo eh-eus komzet, ha da vennoz eo a vennigo ti da zervijer da viken.

VIII. Pennad.

Tou, roue Emat, a gas e vab da ober e hourhemennou da Zavid.

³³⁵ biskoaz : fazi. «biken ».

1. Goude-ze, David a drehas ar Filistined hag a izellaas anezo ; hag eñ a dennas euz o daouarn gwaskenn an tellou.
2. Trehi a reas ivez ar Voabited ; ha goude beza o lakaet war an douar, e ventas anezo gand eur gordenn : diou gordennad a ventas, unan evid ar maro, hag unan all evid ar vuhez : hag ar Voabited a oe lakaet dindan beli David, hag a baeas gwiriou.
3. David a drehas ivez Adarezer, mab Rohob, roue Soba, pa'z ee evid aotrounia war ster a Eufratez.
4. Ha David o veza kemeret dezañ seiteg kant marheg, hag ugent mil den war droad, a drohas nervennoù treid kezeg ar hirri ; ha ne viras anezo nemed kant karr.
5. Ar Siried euz a Zamas o veza deuet evid kennerza Adarezer, roue Soba, David a lazas daou vil warn-ugent anezo.
6. Ha David a lakaas gward e Siria Damas ; hag ar Siried a oe lakaet dindan galloud David, hag a baeas gwiriou dezañ : hag an Aotrou a ziwallas David e peleh bennag ma'z eas.
7. Ha David a gemeras an armou aour o-doa servijerien Adarezer, hag a gasas anezo da Jeruzalem.
8. Hag euz a Vete, hag euz a Verot, kêriou Adarezer, e tegasas David kalz a arem.
9. Pa glevas Tou, roue Emat, penaoz en-doa David trehet oll arme Adarezer,
10. E kasas Joram, e vab, etrezeg ar roue David, evid ober e hourhemennou dezañ, ha trugarekaad anezañ, o veza ma en-doa trehet ha dispennet Adarezer. Rag Tou a oa enebour da Adarezer ; hag eñ a zegasas gantañ listri aour, ha listri arhant, ha listri arem,
11. A ouestlas ar roue David d'an Aotrou, gand an arhant hag an aour en-doa gouestlet euz an oll vroadou en-doa lakaet dindan e halloud ;
12. Euz ar Siria, hag euz a Voab, hag euz a vibien Amnon, hag euz ar Filistined, hag euz a Amelek, hag euz a ziwisk Adarezer, mab Rohob, roue Soba.
13. David a zeuas ivez da veza brudet-braz, pa zistroe goude beza kemeret ar Siria, ha pa lazas triweh mil den e traonienn ar Gourhemennou.
14. Lakaad a reas ivez diwallerien ha gwardou en Idumea ; hag an Idumea oll en em gavas dindan galloud David. Hag an Aotrou a ziwallas David e peleh bennag ma'z eas.
15. Ha David a renas war Izrael oll : ha David a ree barn ha gwir d'e oll bobl.
16. Hogen Joab, mab Sarvia, hag Akimelek, mab Abiatar, a oa beleien vraz ; ha Saraias a oa skrivagner.
17. Banaias, mab Joiada, a oa e penn ar Seretied hag ar Feletied ; ha mibien David a oa priñsed.

IX. Pennad.

Trugarez David e-keñver Mifiboset.

1. Ha David a lavaras : Ha n'eo ket chomet unan bennag³³⁶ euz a di Saul, da behini e hellin ober trugarez en abeg da Jonatas ?
2. Hogen bez' ez oa eur servijer euz a di Saul anvet Siba, hag ar roue o veza e halvet da zond d'e gavoud, a lavaras dezañ : Ha te eo Siba ? Hag eñ a lavaras : Me a zo da zervijer.

³³⁶ n'eo ket chomet unan bennag : fazi : Ha n'eus ket...

3. Hag ar roue a lavaras : Ha chomet ez eus unan bennag euz a di Saul da behini e hellin ober trugarez Doue ? Ha Siba a lavaras d'ar roue : Chom a ra eur mab da Jonatas, hag eñ dinerz en e dreid.

4. Peleh, eme David, ema eñ ? Ha Siba a lavaras d'ar roue : Setu ema e ti Mac'hir, mab Ammiel, e Lodabar.

5. Ar roue David a gasas eta evid e gerhoud euz a di Mac'hir, mab Ammiel, e Lodabar.

6. Pa oe deuet Mifiboset, mab Jonatas, mab Saul, da gavoud David, en em daolas war e henou hag eh azeulas. Ha David a lavaras : Mifiboset ? Hga eñ a lavaras : Setume, da zervijer.

7. Ha David a lavaras dezañ : Na'z-pezh ket a aon ; rag me a ray trugarez en da geñver en abeg da Jonatas, da dad ; ha me a zistaolo dit oll barkou Saul, da dad-koz, ha te a zebro bara bepred ouz va zaol.

8. Hag hemañ oh e azeuli, a lavaras : Piou on-me, da zervijer, evid ma'z-pe sellet ouz eur hi maro eveldon ?

9. Neuze ar roue a halvas Siba, paotr Saul, hag a lavaras dezañ : Kement a oa da Zaul, hag e oll di, em-eus roet da vab da vestr.

10. Laka eta da dalvezoud e zouar evitañ, te, ha da vibien, ha da zervijerien, evid ma tastumi boued da vaga mab da vestr : hogen Mifiboset, mab da vestr, a zebro bepred e vara ouz va zaol. Hogen Siba en-doa pemzeg mab hag ugent servijer.

11. Ha Siba a lavaras d'ar roue : Evel ma eh-eus gourhemennet d'az servijer, va aotrou ha va roue, e ray da zervijer : ha Mifiboset a zebro ouz va zaol, evel unan euz a vibien ar roue.

12. Hogen Mifiboset en-doa eur mab bihan anvet Mika. Ha kement hini a oa e ti Siba a zervije Mifiboset.

13. Hogen Mifiboset a chome e Jeruzalem, o veza ma tebre bepred ouz taol ar roue : hag eñ a oa kamm euz e zaou droad.

X. Pennad.

Hanon, roue an Ammonited, a ra dismegañs da gannaded David.

1. Hogen goude-ze e c'hoarvezas penaoz roue mibien Amnon a varvas ; hag Hanon, e vab, a renas en e leh.

2. Ha David a lavaras : Me a ray trugarez e-keñver Hanon, mab Naas, evel ma en-deus greet e dad trugarez em heñver. David a gasas eta euz e zervijerien evid kemeroud perz en e zoan diwar-benn maro e dad. Ha pa oe deuet servijerien David e douar mibien Amnon,

3. Priñsed mibien Amnon a lavaras da Hanon, o aotrou : Ha te a gred penaoz eo evid enori da dad, ha da zizoania, en-deus degaset David etrezeg ennout ; ha n'eo ket evid anaoud da gêr, selloud piz outi, evid he diskara, en-deus degaset David e zervijerien etrezeg ennout ?

4. Hanon eta eta a gemeras servijerien David, hag a douzas an hanter euz o baro, hag a drohas an hanter euz o zaeou, beteg ar reor ; hag o hasas kuit.

5. Pa oe roet da anaoud kement-se da Zavid, e kasas d'o diambrouga ; rag an dud-se o-doa eur vez vraz. Ha David a lakaas da lavaroud dezo : Chomit e Jeriko ken na vezo kresket ho paro, ha neuze e tistroot.

6. Hogen mibien Amnon o weloud penaoz o-doa greet dismegañs da Zavid, a gasas etrezeg Siried Rohob ha Siried Soba, hag a zegasas ahano, oh o gopraad, ugent mil den war droad : hag euz a roue Maac'ha mil den, hag euz a Istob daouzeg mil den.

7. Pa glevas David kement-se, e kasas Joab gand e oll arme.
8. Neuze mibien Amnon a yeas er-mêz, hag a reizas o arme ouz porz kêr ; hag ar Siried euz a Zoba hag euz a Rohob, hag ar re euz a Istob hag euz a Vaac'ha, a oa en eun tu all, er gompezenn.
9. Pa welas Joab penaoz e oa aozet an emgann outañ, hag a-zirag hag a-dreñv, e tilennas e-touez ar re zibabet euz a Izrael, hag eñ a lakaas e arme a-eneb ar Siried.
10. Hogen ar re all euz an arme a roas da Abisai, e vreur, pehini a gerzas a-eneb mibien Amnon.
11. Ha Joab a lavaras dezañ : Mar bez treh ar Siried din, te a zeuy da skoazia ahanon ; hogen mar bezont treh dit, ez in da skoazia ahanout.
12. Bez kaloneg, ha stourmom evid or pobl hag evid kêr on Doue : hag an Aotrou a ray evel ma plijo gantañ.
13. Joab eta a stourmas ouz ar Siried gand ar bobl a oa gantañ ; hag ar re-mañ a dehas raktal dirazañ.
14. Hogen mibien Amnon o weloud penaoz e oa tehet ar Siried, a dehas ivez dirag Abisai ; hag i en em dennas kêr³³⁷ : ha Joab a zistroas diho mibien Amnon hag a zeuas da Jeruzalem.
15. Ar Siried o weloud penaoz e oant bet trehet dirag Izrael, en em zastumas oll.
16. Hag Adarezer a gasas, hag a zegasas ar Siried pere a oa en tu all d'ar ster ; hag eñ a lakaas da zond o arme ; hogen Sobac'h, mestr brezelidi Adarezer, a oa priñs dezo.
17. Pa oe roet da anaoud kement-se da Zavid, e tastumas Izrael oll, e treuzas ar Jourdan, hag e teuas da Helam : hag ar Siried a droas o arme a-eneb David, hag a stourmas outañ.
18. Hogen ar Siried a dehas a-zirag Izrael, ha David a lazas seiz-kant den war kirri, ha daou-ugent mil war kezeg : skei a reas ivez gand Sobac'h, priñs an arme, pehini a varvas raktal.
19. Pa welas an oll roueed, pere a oa deuet da skoazella Adarezer, penaoz e oant trehet gand Izrael, e oent spontet-braz, hag e tehjont dirag Izrael, hag i eiz mil hag hanter-kant. Hag i a reas ar peoh gand Izrael, hag en em lakaas dindan o beli. A-neuze ar Siried ne gredjont mui rei o skoazell da vibien Amnon.

XI. Pennad.

David a gouez en avoultriez gand Betsabee ; houmañ a laka Urias heh ozah da vervel.

1. A-benn eur bloaz, en amzer ma eo boazet ar roueed da vond d'ar brezel, David a gasas Joab, hag e zervijerien gantañ, hag Izrael oll, pere a wastas mibien Amnon, hag a hronnas Rabba : hogen David a chomas e Jeruzalem.
2. E-keit-se e c'hoarvezas penaoz David a zavas euz e wele goude kreisteiz, hag a vale war lein ti ar roue : hag eñ a welas eur wreg dirazañ, pehini en em walhe war lein he zi ; hag ar wreg-se a oa kaer-meurbed.
3. Ar roue a gasas eta evid gouzoud piou e oa ar wreg-se. Hag e oe roet da anaoud dezañ penaoz e oa hi Betsabee, merh Eliam, gwreg Urias an Helead.
4. Ha David o veza kaset tud di, a lakaas he degas dezañ, ha pa oe deuet hi d'e gavoud e kouskas-eñ ganti : ha raktal en em hlannaas-hi euz he dihlanded.

³³⁷ hag i en em dennas kêr : en em dennas e kêr.

5. Hag hi a zistroas d'he zi, hag hi brazez : hag hi a gasas da lavaroud da Zavid : Brazez on.
6. Ha David a gasas etrezeg Joab evid lavaroud dezañ : Degas d'am havoud Urias an Helead. Ha Joab a gasas Urias da Zavid.
7. Hag Urias a zeuas da gavoud David. Ha David a houlenas digantañ penaoz e oa an doare gand Joab, ha gand ar bobl, ha penaoz ez ee ar brezel ganto.
8. Ha David a lavaras da Urias : Kee d'az ti, ha gwalh da dreid. Hag Urias a yeas er-mêz euz a di ar roue, hag e oe kaset dezañ boued euz a daol ar roue.
9. Hogen Urias a gouskas dirag dor ti ar roue gand servijerien all e aotrou, ha ne ziskennas ket d'e di e-unan.
10. Roet e oe kement-se da anaoud da Zavid, o lavaroud : N'eo ket eet Urias d'e di. Ha David a lavaras da Urias : Ha ne zeuez ket euz an hent³³⁸ ? Perag n'out-te ket diskennet d'az ti ?
11. Hag Urias a lavaras da Zavid : Arh Doue, hag Izrael, ha Juda, a chom dindan teltou, ha Joab, va aotrou, ha servijerien va aotrou, a gousk war an douar, ha me a'z aje em zi evid debri, evid eva, hag evid kouska gand va gwreg ? Evel ma'z out beo, evel ma eo beo da ene, ne rin ket an dra-ze.
12. Ha David a lavaras da Urias : Chom amañ c'hoaz hirio, ha warhoaz az kasin kuit. Hag Urias a chomas e Jeruzalem an deiz-se hag antronoz.
13. Ha David a halvas anezañ evid debri, hag evid eva dirazañ, hag e vezvas anezañ : hag eñ o veza eet er-mêz dioh ar pardaez, a gouskas war e wele gand servijerien e aotrou, ha ne ziskennas ket d'e di.
14. Pa oe deuet ar mintin, e skrivas David eul lizer da Joab, hag a gasas anezañ dre zorn Urias.
15. Evel-henn en-doa skrivet el lizer-ze : Likit Urias e penn ar vrezelidi, el leh ma vezo ar gwsa emgann, ha dilezit eñ, evid ma vezo skoet ha ma varvo.
16. O veza eta ma hronne kêr, Joab a lakaas Urias el leh ma ouie ez oa an dud kreñva.
17. Ha tud kêr o veza deuet er-mêz a stourmas a-eneb Joab, hag a lazaz lod euz a zervijerien David ; hag Urias, an Helead, a varvas ivez.
18. Neuze Joab a gasas tud da Zavid evid rei da anaoud dezañ ar pez a oa c'hoarvezet en emgann.
19. Hag eñ a hourhemennas d'ar hannad, o lavaroud : Pa'z-pezo roet da anaoud d'ar roue kement a zo c'hoarvezet en emgann ;
20. Mar gwelez e sav droug ennañ, ha ma lavar : Perag hoh-hu tostaet ouz ar vur evid en em ganna ? Ha ne ouieh-hu ket penaoz e taoler eul lod braz a zaredou diwar eur vur ?
21. Piou a skoas gand Abimelek, mab Jerobaal ? Ha n'eo ket eur wreg a daolas warnezañ eun tamm mên-milin diwar ar vur, hag a lazaz anezañ e Tebez ? Perag hoh-hu tostaet ouz ar vur ? Neuze e liviri : Urias, an Helead, da zervijer, a zo maro ivez.
22. Ar hannad eta a yeas kuit, hag a zeuas da gavoud David, hag a lavaras dezañ kement en-doa gourhemennet Joab dezañ.
23. Hag ar hannad a lavaras da Zavid : An enebourien a zo bet treh deom, hag a zo deuet er-mêz war ol lerh : ha ni ivez a zo eet war o lerh beteg porz kêr.
24. Hogen ar waregerien o-deus stlapet o daredou war da zervijerien diwar ar vur : ha lod euz a zervijerien ar roue a zo maro, hag Urias, an Helead, da zervijer, a zo maro ivez.

³³⁸ Ha ne zeuez ket euz an hent : n'out ket eet da veaji ?

25. Ha David a lavaras d'ar hannad : An dra-mañ a liviri da Joab : na vezez ket mantret evid kement-se : rag darvoud ar brezel a zo mond-dond ; hag a-wechou unan, a-wechou eun all, a zo diskaret gand ar hleze. Kaloneka ar vrezilidi a-eneb kêr, ha kentraou anezo, evid ma tiskari anezi.

26. Pa glevas gwreg Urias penaoz ez oa maro heh ozah, e ouelas anezañ.

27. Pa oe tremenet amzer ar hañv, David a gasas d'he herhad evid dond d'e di ; hag eñ he hemeras da wreg : hag hi a hanas dezañ eur mab. Hag ar pez en-doa greet David a zsiplijas d'an Aotrou.

XII. Pennad.

Natan a damall David diwar-benn e behed. Ganedigez Salomon.

1. An Aotrou eta a gasas Natan etrezeg David. Hag hemañ o veza deuet d'e gavoud, a lavaras dezañ : Daou zen a oa en eur gêr, unan pinvidig, hag eun all paour.

2. An hini pinvidig en-doa kalz a zeñved hag a ejenned.

3. Hogen an hini paour n'en-doa netra ebed nemed eun dañvadez vihan, en-doa prenet ha maget, hag a greske en e di gand e vugale, o tebri euz e vara, oh eva euz e gop, hag o kouska en e gerhenn ; hag hi a oa dezañ evel eur verh.

4. Eun diavêziad o veza deuet da weloud an hini pinvidig, ne fellas ket da hemañ kemeroud euz e zeñved nag euz e ejenned e-unan, evid ober banvez d'an diavêziad a oa deuet d'e weloud ; hogen kemeroud a reas dañvadez an hini paour, hag eh aozas anezi evid rei da zebri d'an diavêziad.

5. Ha David o sevel droug braz ennañ ouz an den-ze, a lavaras da Natan : Evel ma eo beo an Aotrou, an den en-deus greet kement-se a dle beza lakaet d'ar maro.

6. Peder dañvadez a zistaolo evid unan, o veza ma en-deus greet an dra-ze, ha n'en-deus ket bet a azaouez.

7. Neuze Natan a lavaras da Zavid : Te eo an den-ze. Setu petra a lavar an Aotrou, Doue Izrael : Me em-eus da eouliet da roue war Izrael, ha me em-eus da dennet euz a zaouarn Saul.

8. Roet em-eus dit ti da aotrou, ha gwraez da aotrou en da gerhenn, ha roet em-eus dit ti Izrael ha Juda : ha mar deo bihan kement-se, e roin c'hoaz dit kalz muioh.

9. Perag eta eh-eus-te disprizet ger an Aotrou, hag eh-eus-te greet droug dirazon ? Skoet eh-eus gand ar hleze Urias, an Helead, hag e wreg eh-eus kemeret da wreg dit, hag e lazet eh-eus eñ gand kleze mibien Amnon.

10. Rag-se n'ez ay biken ar hleze er-mêz euz da di, o veza ma eh-eus va disprizet, ha ma eh-eus kemeret da wreg dit, gwreg Urias, an Helead.

11. Setu eta petra a lavar an Aotrou : Lakaad a rin droug da zavel dit euz da di da-unan, ha me a gemero da wragez dirag da zaoulagad, hag o roin d'an nesa, hag eñ a gousko gand da wragez dirag an heol-ze.

12. En amhoulou eh-eus greet kement-se ; hogen me a ray an dra-mañ dirag Izrael oll, ha dirag an heol.

13. Ha David a lavaras da Natan : Pehet em-eus a-eneb an Aotrou. Ha Natan a lavaras da Zavid : Distaolet eo ivez da behed gand an Aotrou : ne varvi ket.

14. Koulskoude o veza ma eh-eus lakaet enebourien an Aotrou da zroug-pedi en abeg da gement-se, ar mab a zo ganet dit a varvo.

15. Ha Natan a zistroas d'e di. Hag an Aotrou a skoas gand ar bugel he-doa ganet gwreg Urias da Zavid, hag eñ a oe tohor.

16. Hogen David a bedas an Aotrou evid ar bugel, hag eñ a yunas, hag o veza en em dennet a-du, en em daolas d'an douar.

17. Hogen henaoured e di a zeuas, hag a fellas dezo e lakaad da zevel diwar an douar ; hogen ne fellas ket dezañ, ha ne zebras ket a voued ganto.

18. Hogen ar seizved devez e varvas ar bugel, ha servijerien David o-doa aon o rei da anaoud dezañ penaoz e oa maro ar bugel ; rag i a lavare : pa oa c'hoaz beo ar bugel, mar komzem outañ, ne zelaoue ket ahanom : pegement en em hlaharo muioh, ma leverom penaoz eo maro ar bugel ?

19. Hogen pa welas David penaoz e kuzmuze e zervijerien, eh anavezaz penaoz e oa maro ar bugel³³⁹. Hag eñ a lavaraz d'e zervijerien : Ha maro eo ar bugel. Hag i a lavaraz : Maro eo.

20. Neuze David a zavas diwar an douar, hag en em walhas, hag en em eoulias : ha goude beza nevezet e zillad, ez eas e ti an Aotrou, hag eh azeulas : goude-ze e tistroas d'e di e-unan, e houlennas boued, hag e tebras.

21. Hogen e zervijerien a lavaraz dezañ : Perag e rez-te evel-se ? Pa oa beo ar bugel, e yunes, hag e oueles en abeg dezañ : hogen pa eo maro ar bugel, out savet, hag eh-eus debret.

22. Hag eñ a lavaraz : Yunet ha gouelet em-eus evid ar bugel endra ma oa beo ; rag me a lavare : Piou a oar ma n'her roy ket an Aotrou din³⁴⁰, ha ma ne vevo ket ar bugel ?

23. Hogen bremañ pa eo maro, perag e yunfen-me ? Ha me a hellfe e lakaad da zistrei ? Me eo a yelo d'e gavoud : hogen eñ ne zistroy ket d'am havoud.

24. Ha David a zihlaharas Betsabee e wreg, a yeas d'he havoud, hag a gouskas ganti : hag hi a hanas eur mab a halvaz Salomon ; hag an Aotrou a garas anezañ.

25. Hag eñ a gasaz da Zavid ar profed Natan, pehini a halvaz anezañ karadeg d'an Aotrou, o veza ma oa karet gand an Aotrou.

26. Hogen Joab a stourme ouz Rabbat mibien Amnon³⁴¹, hag eñ a oa dare da gemeroud kêr ar roue.

27. Ha Joab a gasaz kannaded da Zavid evid lavaroud dezañ : Stourmet em-eus ouz Rabbat, ha kêr an doureier a zo dare da veza kemeret.

28. Stroll eta bremañ an oll bobl, ha gronn kêr, ha kemer hi, gand aon, mar bez diskaret ganen, na ve lakaet an treh war va ano.

29. David eta a strollas an oll bobl, hag a gerzas a-eneb Rabbat ; hag eñ a stourmas outi hag he hemeras.

30. Tenna a reas diwar penn o roue ar gurunenn pehini a boueze eun talant aour, ha war behini ez oa mein talvouduz-braz : hag e oe lakaet war penn David. Degas a reas ivez euz a gêr eur preiz braz.

31. Hag o veza lakaet ar bobl er-mêz, e heskennaz anezo, e frikaz anezo gand kirri houarnet, e trohas anezo a-dammou gand kontilli, e taolas anezo e fornioù : hag evel-se e reas da holl gêriou mibien Amnon. Ha David hag e oll arme a zistroas da Jeruzalem.

XIII. Pennad.

Amnon a wall Tamar e hoar. Absalon a laka e laza e-kreiz eur banvez.

³³⁹ eh anavezaz penaoz e oa maro ar bugel : e ouiaz e oa maro ar bugel.

³⁴⁰ ma n'her roy ket an Aotrou din : piou a oar ha n'en-devo ket an Aotrou truez ouzin.

³⁴¹ Rabbat mibien Amnon : eur gêr eo Rabbat, a zo da vibien Amnon.

1. Goude-ze Amnon, mab David, a zeuas da garoud stard eur hoar da Absalon, mab ivez da Zavid, hag hi kaer-meurbed, hag a oa anvet Tamar.
2. Hag eñ en-doa eur garantez ker braz eviti, ma kouezas klañv gand e garantez eviti : rag o veza ma oa hi plah-yaouank, e wele ervad e vije diêz dezañ ober droug ebed ganti.
3. Hogen Amnon en-doa eur mignon, anvet Jonadab, mab Semmaa, breur David, den poelleg-braz.
4. Hag hemañ a lavaras dezañ : Perag, mab ar roue, e treuteez-te evel-se bemdez ? Perag n'hel levezet ket din ? Hag Amnon a lavaras dezañ : Me a gar Tamar, c'hoar Absalon va breur.
5. Ha Jonadab a lavaras dezañ : Gourvez war da wele, ha gra neuz da veza klañv : ha pa zeuy da dad d'az kweloud, lavar dezañ : Ra zeuy, me az ped, Tamar va hoar, da rei da zebri din, ha ra aozo din eur boued a zebrin euz he dorn.
6. Amnon eta a hourvezas, hag a reas neuz da veza klañv : ha pa oe deuet ar roue d'e weloud, e lavaras dezañ : Ra zeuy, me az ped, Tamar va hoar, ma aozo dirazon diou wastell, ha ma kemerin boued euz he dorn.
7. David eta a gasas da di Tamar evid lavaroud dezi : Deus da di Amnon da vreur, hag aoz boued dezañ.
8. Ha Tamar a zeuas da di he breur Amnon ; hag eñ a oa gourvezet : hag hi a gemeras bleud, e veskas hag e veras, hag a lakaas gwastellou da boaza dirazañ.
9. Hag hi o kemeroud ar pezh he-doa lakaet da boaza, e lakaas dirazañ ; hogen eñ ne fellas ket dezañ debri. Hag Amnon a lavaras : Kasit kuit an oll. Ha pa oe kaset kuit an oll,
10. E lavaras Amnon da Damar : degas ar boued em hambr, evid ma tebrin euz da zorn. Tamar eta a gemeras ar gwastellou he-doa greet, hag o degasas da Amnon he breur en e gambr.
11. Goude m'he-doe-hi degaset boued dezañ, e krogas-eñ enni, hag e lavaras dezi : Deus, gourvez ganen, va hoar.
12. Hag hi a lavaras dezañ : Nann, va breur, na wall ket ahanon, rag eun dra berz eo se en Izrael : na ra ket an droug-se.
13. Rag me ne hellin ket gouzañvi va mezegez, ha te a vezo evel eun den diskiant en Izrael. Komz kentoh ouz ar roue, ha ne zinaho ket va rei dit.
14. Hogen ne fellas ket dezañ en em rei d'he fedennou, hag o veza ma oa kreñvoh egeti, dre nerz e wallas anezi.
15. Neuze e savas e Amnon eur has braz outi : en heveleb doare ma oa brasoh ar has en-doe outi, eged na oa bet ar garantez en-doa kent eviti. Hag Amnon a lavaras dezi : Sao, ha kee kuit.
16. Hag hi a lavaras dezañ : An droug a rez din bremañ, o va has kuit, a zo gwasoh eged an hini eh-eus greet din kentoh. Hogen ne fellas ket dezañ sealoui anezi.
17. Hag o veza galvet eur paotr a zervije anezañ, e lavaras : Kas houmañ kuit diouzin, ha serr an nor war he lerh.
18. Tamar he-doa eur zae hir-braz ; rag saeou en doare-ze a zouge merhed ar roueed e-pad ma oant plahed-yaouank. Paotr Amnon he hasas eta kuit hag a zerras an nor war he lerh-hi.
19. Ha Tamar o veza taolet ludu war he fenn, hag o veza roget he sae, a lakaas he daouarn war he fenn, hag a yeas kuit en eur harmi.
20. Hogen Absalon, he breur, a lavaras dezi : Ha gourvezet eo bet da vreur Amnon ganez ? Hogen , va hoar, tav bremañ ; da vreur eo : ha na hlahar ket da galon evid-se. Tamar eta a chomas e ti Absalom, he breur, hag hi doaniet-braz.

21. Hogen pa glevas ar roue kement-se, e oe glaharet-braz ; koulskoude ne fellas ket dezañ doania kalon Amnon e vab, o veza ma kare anezañ, dre ma oa e vab-hena.

22. Absalon ne lavaras netra da Amnon, na droug na mad ; rag Absalon a gasee Amnon, o veza m'en-doa gwallet Tamar e hoar.

23. Daou vloaz goude, e c'hoarvezas penaoz Absalom a lakaas touza e zeñved e Baalhasor, a zo tost da Efraim : hag Absalom a halvas oll vugale ar roue.

24. Hag eñ a yeas da gavoud ar roue, hag a lavaras dezañ : Setu ez eer da douza deñved da zervijer : deuet, me az ped, ar roue hag e dud da di e zervijer.

25. Hag ar roue a lavaras da Absalom : Nann, va mab, na bed ket ahanom da vond oll evid da ziega. Hogen kaer en-doe e bedi stard, ne fellas ket d'ar roue mond ; hogen e venniga a reas.

26. Hag Absalom a lavaras dezañ : Ma ne fell ket dit dond, deuet da vihanna ganeom, me az ped, va breur Amnon. Hag ar roue a lavaras dezañ : N'eo ket red ez afe ganez.

27. Hag Absalom a bedas stard anezañ, hag ar roue a lezas da vond gantañ Amnon, hag oll vugale ar roue. Hag Absalon en-doa greet eur banvez evel eur banvez roue.

28. Hogen Absalom en-doa gourhemennet d'e baotred, o lavaroud : Likit evez pa vezo Amnon mezo gand ar gwin, ha pa livirin deoh : skoit eñ, ha lazit eñ : n'ho-pezet ket a aon ; rag me eo a hourhemenn kement-se deoh. En eme greñvait ha bezit tud a galon.

29. Paotred Absalom a reas eta e-keñver Amnon, evel m'en-doa gourhemennet Absalom dezo. Hag oll vugale ar roue a zavas, ha pep hini anezo a bignas war e vul³⁴² hag a yeas kuit.

30. Ha pa edont c'hoaz en hent, e teuas ar vrud beteg David, penaoz en-doa Absalom lazet oll vugale ar roue, ha ne oa chomet hini anezo.

31. Ar roue a zavas kerkent, hag a rogas e zillad, hag en em daolas d'an douar ; hag e oll zervijerien a oa en e gichenn a rogas o dillad.

32. Hogen Jonadab, mab Semmaa, breur David, a lavaras : Ne gredo ket ar roue, va aotrou, penaoz eo bet lazet oll vugale ar roue : Amnon hepken a zo maro ; rag Absalom en-doa bet koun anezañ, adaleg an deiz e pehini en-doa gwallet Tamar, e hoar.

33. Na lakaet ket eta an aotrou, va roue, kement-se en e benn, o kredi penaoz eo bet lazet oll vugale ar roue ; rag Amnon hepken a zo maro.

34. Hogen Absalom a dehas : hag ar paotr a oa war-hed a zavas e zaoulagad hag a zellas : ha setu e welas eul lod braz a dud a zeue dre eun hent distro war harz ar menez.

35. Ha Jonadab a lavaras d'ar roue : Setu e teu bugale ar roue. Evel m'en-doa lavaret da zervijer eo bet c'hoarvezet.

36. Ha pa oe ehanet da gomza, e eo gwelet bugale ar roue. Hag i, o veza deuet, a zavas o mouez en eur ouela : hag ar roue hag e oll dud a ouelas doureg.

37. Hogen Absalom, o veza tehet, a yeas etrezeg Tolomai, mab Ammiud, roue Gesur : ha David a ouele bemdez e vab.

38. Absalom o veza tehet, hag o veza deuet da Hesur, a chomas eno tri bloaz.

39. Ha David a ehanas da wallgas Absalon, o veza ma oa dihlaharet diwar-benn maro Amnon.

XIV. Pennad.

³⁴² e vul : e vulez.

Absalom a zistro da Jeruzalem.

1. Hogen Joab, mab Sarvia, o weloud penaoz kalon ar roue a oa troet ouz Absalom,
2. A gasas da Dekua, evid kerhould di eur wreg fur, da behini e lavaras : Gra neuz da veza glaharet, ha gwisk dillad kañv, ha n'en em lard ket gand eoul, evid ma vezi evel eur wreg a zo glaharet pell 'zo diwar-benn eun den maro.
3. Hag ez i da gavoud ar roue, hag e komzi evel-henn outañ. Ha Joab a lakaas en he genou ar geriou a dlee da lavaroud.
4. Ar wreg euz a Dekua o veza eet eta da gavoud ar roue, en em strinkas d'an douar dirazañ hag a lavaras : Kennerz ahanon, o ! roue.
5. Hag ar roue a lavaras dezi : Petra eo da gevridi ? Hag hi a lavaras : Allaz ! eun intañvez on ; rag va ozah a zo maro.
6. Da vatez he-doa daou vab, pere a zo en em rendaelet er park ; ha en oa den evid harza outo : hag unan anezo en-deus skoet gand egile, hag en-deus e lazet.
7. Ha setu e sav an oll gerent a-eneb da vatez, o lavaroud : Ro deom an hini en-deus skoet gand e vreur, evid ma lazim anezañ evid buhez e vreur en-deus tennet digantañ, ha ma kasim an her da get : hag i a fell dezo moug a diweza elfenn a chomganen, evid na chomo mui d'am ozah, nag ano, na netra all ebed war an douar.
8. Hag ar roue a lavaras d'ar wreg : Kee d'az ti, ha me a roy gourhemenn diwar da benn.
9. Ha gwreg Tehua a lavaras d'ar roue : Aotrou, va roue, ra gouezo ar fallagriez-se warnon ha war ti va zad ; hogen ra vezo dinamm ar roue hag e dron.
10. Hag ar roue a lavaras : Ma heg hini ebed ouzit, degas eñ din, ha biken mui ne heskino ahanout.
11. Hag hi a lavaras : R'en-devezo koun ar roue euz an Aotrou Doue, na lezo ket kerent nes ar gwad d'en em veñji an eil goude egile, ha da laza va mab. Hag eñ a lavaras : Evel ma eo beo an Aotrou, ne gouezo ket eur vlevenn euz a benn da vab war an douar.
12. Hag ar wreg a lavaras : Ra lavaro da vatez eur ger d'an aotrou he roue. Hag eñ a lavaras : Komz.
13. Hag ar wreg a lavaras : Perag e kredez-te ober kement-se a-eneb pobl Doue, ha perag en-deus-eñ pehet ar roue³⁴³, ha n'en-deus-eñ ket azgalvet an hini en-doa kaset kuit ?
14. Oll e varvom, hag, evel an doureier, e tiverom en douar heb distrei : ha ne fell ket da Zoue e ve kollet eun ene ; hogen gourzeza a ra, gand aon na ve kollet a-grenn an hini a zo bet kaset kuit.
15. Rag-se on deuet, evid lavaroud kement-se d'ar roue, va aotrou, dirag ar bobl. Ha da vatez he-deus lavaret : Me a gomzo ouz ar roue, evid gweloud ma na ray ket diou lavar e vatez.
16. Hag ar roue en-deus selaouet, evid ma tenno e vatez euz a zaouarn ar re oll pere a fello dezo va has er-mêz euz a zegouez Doue, me ha va mab war eun dro.
17. Lavaret eta da vatez, ra vezo greet ger an aotrou, va roue, evel eur sakrifis. Hag an aotrou, va roue, a zo evel eun êl Doue, pehini n'eo tenerraet na gand ar vennoz na gand ar valloz : rag-se ema an Aotrou, da Zoue, ganez.
18. Hga ar roue a lavaras d'ar wreg : Na guz ket ouzin ar pez ez an da houlenn diganez. Hag ar wreg a lavaras dezañ : Komz, aotrou va roue.

³⁴³ en-deus-eñ pehet ar roue : en-deus pehet ar roue.

19. Hag ar roue a lavaras : Ha n'ema ket dorn Joab ganez e kement-se ? Hag ar wreg a lavaras : Evel ma eo beo da ene, aotrou va roue, n'ez a nag a-zehou nag a-gleiz, kement en-deus lavaret an aotrou, va roue : rag da zervijer Joab eo en-deus gourhemennet an dra-ze din, hag eñ eo en-deus lakaet an oll heriou-ze e genou da vatez.

20. Evid ma trojen doare al lavar-ze, en-deus Joab da zervijer gourhemennet an dra-ze din. Hogen te, aotrou va roue, a zo fur, evel ma'z eo fur eun êl, ha te a oar kement a zo war an douar.

21. Hag ar roue a lavaras da Joab : Setu on habaskaet, hag e rin hervez da her : kee eta, hag azgalv va mab Absalom.

22. Neuze Joab en em daolas war e henou d'an douar, a azeulas hag a vennigas ar roue. Ha Joab a lavaras : Hirio e oar da zervijer penaoz en-deus kavet trugarez dirag da zaoulagad, aotrou va roue ; rag greet eh-eus diogh lavar da zervijer.

23. Joab eta a zavas hag a yeas da Hesur, hag a zegasas Absalom da Jeruzalem.

24. Hag ar roue a lavaras : Distroet d'e di, hogen na welet ket ahanon. Absalom a zistroas eta d'e di ha ne welas ket ar roue.

25. Hogen ne oa den ebed e oll Izrael ker kaer ha ker klok hag Absalom : adaleg kalon an troad³⁴⁴ beteg lein ar penn, ne gaved abeg ebed ennañ.

26. Ha pa douze e benn (e douza a ree eur wech ar bloaz, o veza ma oa re bounner e bennad-bleo), e vleo a boueze daou-hant sikl, hervez ar pouez a zo anavezet gand an oll.

27. Hogen tri mab a oa ganet da Absalom, hag eur verh anvet Tamar, hag hi kaer da weloud.

28. Absalom a chomas daou vloaz e Jeruzalem, ha ne welas ket ar roue.

29. Hag eñ a gasas etrezeg Joab, evid ma her hasje etrezeg ar roue : hag hemañ ne fellas ket dezañ dond d'e gavoud : ha goude beza kaset etrezeg ennañ eun eil gwech, heb ma fellas dezañ dond d'e gavoud,

30. E lavaras d'e zervijerien : C'hwi a oar penaoz en-deus Joab eur park tost d'am fark, hag a zo heiz ennañ : it eta, ha likit an tan ennañ. Ha servijerien Absalom a lakaas an tan en heiz, ha servijerien Joab a zeuas, goude beza roget o dillad, hag a lavaras : Servijerien Absalom o-deus lakaet an tan e lod euz da bark.

31. Ha Joab a zavas hag a yeas da di Absalom, hag a lavaras dezañ : Perag da zervijerien o-deus-i lakaet an tan em fark ?

32. Hag Absalom a lavaras da Joab : Kaset em-eus tud dit evid da bedi da zond d'am havoud, hag evid m'az kasjen etrezeg ar roue, evid lavaroud dezañ : Perag on-me deuet euz a Hesur ? Gwell e ve din beza eno : me a houlenñ eta ma welin ar roue : mar dalh soñj euz va fallagriez, ra lazo ahanon.

33. Joab a yeas eta da gavoud ar roue, hag a lavaras kement-se oll dezañ. Hag Absalom a oe galvet ; hag eñ a yeas etrezeg ar roue, hag a azeulas oh en em deurel war e henou dirazañ : hag ar roue a bokas da Absalom.

XV. Pennad.

Absalom o sevel a-eneb David e dad.

1. Goude-ze Absalom a lakaas ober kirri evitañ, hag a gemeras marheien, hag hanter-kant den evid kerzoud en e raog.

³⁴⁴ kalon an troad : sol an troad.

2. Hag Absalom o sevel diogh ar mintin en em zalhe en e zav ouz an nor, hag eñ a halve kement hini en-doa kevridi evid dond da gavoud ar roue evid beza barnet : hag eñ a lavare : A be gêr out-te ? Hag hemañ a lavare : Euz a unan euz a vreuriezhou Izrael eo da zervijer.
3. Hag Absalom a lavare dezañ : Da lavariou a gavan mad ha reiz : hogen n'eus lakaet den ebed gand ar roue evid da zelaoui ; hag Absalom a lavare neuze :
4. Piou a lakay ahanon da varner war ar vro, evid ma teuy d'am havoud kement hini en-devezo kevridi, ha ma varnin anezañ hervez ar reiz ?
5. Ha pa dostae eur re evid e zaludi, eñ a astenne e zorn, a groge ennañ, hag a boke dezañ.
6. Hag evel-se e ree d'ar re oll euz a Izrael a zeue da gavoud ar roue evid beza barnet ; hag eñ a hoale kalonou an dud-se.
7. Hogen da benn daou-ugent vloaz, e lavaras Absalom d'ar roue David : Va lez da vond da Hebron evid seveni va gouestlou em-eus greet d'an Aotrou.
8. Rag da zervijer, pa edo e Gesur er Siria, en-deus greet ar gouestl-mañ, o lavaroud : Ma laka an Aotrou ahanon da zsitrei da Jeruzalem, e kinnigin eur sakrifis d'an Aotrou.
9. Hag ar roue David a lavaras dezañ : Kee e peoh. Hag eñ a zavas, hag a yeas da Hebron.
10. Hogen Absalom a gasas spierien e oll vreuriezhou Izrael, evid lavaroud : Kerkent ha ma klevfot son ar horn-boud, livirit : Absalom a ren e Hebron.
11. Daou-hant den a yeas gand Absalom euz a Jeruzalem pa o galvas ; hag i a yee gand eur galon didroidel, hag heb gouzoud perag ez eent.
12. Absalom a lakaas ivez da zond Ac'hitofel ar Giloniad, kuzulier David, euz e gêr Gilo. Ha pa edo o kinniga ar viktimou, e savas eun dispah kreñv, hag ar bobl a zirede etrezeg Absalom a greske mui-oh-vui.
13. Neuze e teuas eur hannad da Zavid, hag a lavaras dezañ : Izrael oll a ya war-lerh Absalom a galon vad.
14. Ha David a lavaras d'e zervijerien a oa gantañ e Jeruzalem : Savit ha tehom : rag ne hellim ket mond kuit a-zirag Absalom : hastit mond er-mêz, gand aon na grogje ennom, ha na vem dispennet gantañ, ha na lazje oll re gêr gand ar hleze.
15. Ha servijerien ar roue a lavaras dezañ : Da zervijerien a zo dare da ober kement a hourhemmenno dezo an aotrou, or roue.
16. Ar roue eta a yeas er-mêz, hag e oll di war e lerh : hag eñ a lezas deg euz e wragez-ferhed³⁴⁵ evid diwalloud e di.
17. Pa oe eet ar roue er-mêz hag an oll Izraelited war e lerh, eh ehanas pa oa eet pell diogh e di.
18. Hag e oll zervijerien a gerze en e gichenn : hag ar bandennou a Zeretied hag a Feletied, hag ar Getied oll, brezelidi galoneg ; hag i c'hweh-kant den, pere a oa deuet euz a Het war e lerh, a yee oll a-raog ar roue.
19. Neuze ar roue a lavaras da Etaï ar Getead : Perag e teuez-te ganeom ? Distro, ha chom gand ar roue neevz, o veza ma'z out diavêziad, ha mar dout deuet er-mêz euz da vro.
20. Abaoe deh out deuet, ha red e ve dit hirio dond er-mêz ganeom ? Evidon, me a yelo d'al leh ma tlean da vond : distro-te, ha kas da vreudeur ganez ; hag an Aotrou a ray en da geñver trugarez ha gwirionez, o veza ma eh-eus diskouezet azaouez ha fealded.

³⁴⁵ e wragez-ferhed : ajorbadenned.

21. Hag Etai a lavaras d'ar roue : Evel ma eo beo an Aotrou, ha ma eo beo an aotrou, va roue, e pe leh bennag ma vezi, te, aotrou va roue, pe gand ar maro, pe gand ar vuhez, eno e vezo ivez da zervijer.

22. Ha David a lavaras da Etai : Deus, ha treuz. Hag Etai ar Gelead a dreuzas, hag an dud oll a oa gantañ, hag ar re all euz ar bobl.

23. An oll a ouele gand eur hri braz, e-pad ma treuze an oll bobl. Ar roue a dreuzas ivez froud Sedron, hag an oll bobl a gerze a-hed an hent a zell ouz an distro.

24. Hogen Sadok, ar Beleg-braz, a zeuas ivez, ha gantañ an oll Levited, pere a zouge arh kevredigez Doue : hag i a ziskennas arh Doue diwar o diskoaz. Hag Abiatar a bignas, ken na oe tremenet an oll bobl a oa deuet er-mêz euz a gêr.

25. Hag ar roue a lavaras da Zadok : Dizoug³⁴⁶ arh Doue da gêr : mar kavan gras dirag an Aotrou, e lakay ahanon da zistrei, ha da weloud adarre e arh, hag e dabernakl.

26. Hogen ma lavar din : Ne blijez ket din ; dare on, greet ahanon evel ma kavo dezañ e vezo mad.

27. Hag ar roue a lavaras da Zadok ar Beleg-braz : O Gweler³⁴⁷, distro da gêr e peoh, ha da zaou vab ganez ; Ac'himas da vab, ha Jonatas, mab Abiatar.

28. Setu en em guzin e kompezennou an distro, ken na vezo deuet din kelou euz ho perz.

29. Sadok eta hag Abiatar a zegasas arh Doue da Jeruzalem hag a chomas eno.

30. Koulskoude David a bigne war kreh³⁴⁸ ar gwez olived, hag a bigne en eur ouela ; mond a ree war e dreid noaz, ha goloet e benn ; hag an oll bobl a oa gantañ a bigne en eur ouela, ha goloet o fenn.

31. Hogen roet e oe da anaoud da Zavid penaoz Arc'hitofel a oa ivez en dispah gand Absalom. Ha David a lavaras : Diskar, Aotrou, me az ped, kuzul Arc'hitofel.

32. Ha pa bigne David war lein ar menez, el leh e tlee azeuli an Aotrou, setu e teuas en e raog Kusai euz a Arac'h, pehini a oa roget e zillad ha goloet e benn a zouar.

33. Ha David a lavaras dezañ : Mar deuez ganen, e vezi eur beh evidon.

34. Hogen mar distroez d'ar gêr, ha ma levez da Absalom : Da zervijer on, o roue ! ; evel ma em-eus servijet da dad, e servijin ahanout ; e kasi da get kuzul Arc'hitofel.

35. Hogen bez' eh-eus ganez ar veleien Sadok hag Abiatar : ha kement a glevi e ti ar roue, e liviri d'ar veleien Sadok hag Abiatar.

36. Bez' o-deus ganto daou vab, Ac'himaas, mab Sadok, ha Jonatas, mab Abiatar : ha c'hwi a gaso da lavaroud din kement ho-pezo klevet.

37. Kusai eta, mignon David, a zsitroas da gêr, hag Absalom a yeas ivez e Jeruzalem en heveleb amzer.

XVI. Pennad.

Absalom a ya e-barz Jeruzalem. Gwalla a ra gwrazez-serhed e dad.

1. Pa en-doe David tremenet eun nebeud lein er menez, Siba, paotr Mifiboset, a yeas war e arbenn gand daou azen, war pere ez oa daou-hant bara, ha kant pakad rezin seh, ha kant goñvor fiez, hag eur bouhkenn gwin.

³⁴⁶ Dizoug : kas en-dro.

³⁴⁷ O Gweler : O ! te a wel (?)

³⁴⁸ war kreh : war krehenn.

2. Hag ar roue a lavaras da Ziba : petra a fell dit da ober gand an dra-ze ? Ha Siba a lavaras : An azened a zo aze evid ma pigno warnezo servijerien ar roue ; ar baraou hag ar fiez evid rei da zebri d'az paotred ; hag ar gwin evid rei da eva da neb en-devezo fallaenn en distro.

3. Hag ar roue a lavaras : Peleh ema mab da vestr ? Ha Siba a lavaras d'ar roue : Chomet eo e Jeruzalem, o lavaroud : Ti Izrael a zistaolo hirio din rouantelez va zad.

4. Hag ar roue a lavaras da Ziba : Bezet dit kement a oa da Vifiboset. Ha Siba a lavaras : Da bedi a ran ma kavin trugarez dirazout, aotrou va roue.

5. Pa oe deuet ar roue David war harz Bahurim, setu e teuas er-mêz ahano eun den euz a gerentiez ti Saul, anvet Semei, mab Gera, pehini o vond en e raog, a villige anezañ.

6. Hag eñ a daole mein ouz David hag ouz oll zervijerien ar roue David : hogen an oll bobl hag an oll vrezelidi a gerze a-zehou hag a-gleiz war-dro d'ar roue.

7. Hag evel-henn e lavare Semei, o villiga ar roue : Deus er-mêz, deus er-mêz, den a wad, den fallagr.

8. An Aotrou en-deus distaolet warnout oll wad ti Saul ; o veza ma eh-eus aloubet ar rouantelez warnezañ : hag an Aotrou en-deus lakaet ar rouantelez etre daouarn Absalom da vab : ha setu e kouez warnout an droug eh-eus greet, o veza ma out eun den a wad.

9. Hogen Abisai, mab Sarvia, a lavaras d'ar roue : Perag e villig ar hi maro-ze an aotrou, va roue ? Va lez da vond, hag e trohin e benn dezañ.

10. Hag ar roue a lavaras : Petra a zo etre c'hwi ha me, mibien Sarvia ? List eñ da villiga ; rag an Aotrou eo en-deus gourhemennet dezañ milliga David : ha piou a gredo lavaroud dezañ : Perag e rez-te evel-se ?

11. Ha David a lavaras da Abisai, ha d'e oll zervijerien : Setu va mab, pehini a zo deuet ahanon, a glask va buhez ; pegement mui bremañ mab Jeremi ? List eñ, list eñ da villiga hervez gourhemenn an Aotrou.

12. Marteze e sello an Aotrou ouz va glahar ; hag e tistaolo din eur mad evid ar valloz am-eus hirio.

13. David eta a yee en e hent, hag e dud gantañ. Hogen Semei a yee war e lerh, o kerzoud a du war lein ar menez ; hag eñ a villige ar roue, hag a daole outañ mein ha douar.

14. Koulskoude ar roue a erruas, hag an oll bobl a oa gantañ, hag i skuiz-braz : hag eno e tiskuizjont.

15. Hogen Absalom hag an oll bobl a oa gantañ a yeas e Jeruzalem, hag Arc'hitofel gantañ.

16. Pa'z eas Kusai, an Arac'hiad, mignon David, etrezeg Absalom, e lavaras dezañ : Me az salud, roue, me az salud, roue.

17. Hag Absalom a lavaras dezañ : Hag hounnez eo ar garantez eh-eus evid da vignon ? Perag n'out-te ket eet gand da vignon ?

18. Ha Kusai a lavaras da Absalom : Doue ra viro ; rag me a vezo d'an hini en-deus dilennet an Aotrou, hag an oll bobl-mañ, hag Izrael oll, hag e chomin gantañ.

19. Hogen evid-se piou a zervijin-me ? Ha n'eo ket va mab ar roue ? Evel ma em-eus sentet ouz da dad, e sentin ouzit.

20. Neuze e lavaras Absalom da Arc'hitofel : Kuzulit oll petra on-eus da ober.

21. Hag Arc'hitofel a lavaras da Absalom : Kee da gaoud serhed da dad, en-deus lezet evid diwalloud e di, evid pa glevo Izrael oll penaoz ez-pezo mezekaet da dad, ma en em stagint kreñvoh ouzit.

22. Stegnet e oe eta eun telt evid Absalom war lein an ti ; hag eñ a yeas da gaoud gwragez-serhed e dad dirag Izrael oll.

23. Hogen ar huzul a roe Arc'hitofel en deiziou-ze, a oa evel pa houlenñ eur re kuzul digand Doue : evel-se e oa oll guzuliou Arc'hitofel, ha pa e oa gand David, ha pa e oa gand Absalom.

XVII. Pennad.

Kusai a ro da anaoud da Zavid ar pezh 'zo c'hoarvezet e Jeruzalem.

1. Hogen Arc'hitofel a lavaras da Absalom : Dilenna a rin daouzeg mil den ganen, ha me a zavo hag a yelo war-lerh David en noz-mañ.

2. Hag oh en em deurel warnezañ, endra ma vezo skuiz hag heb armou en e zaouarn, e skoin gantañ : ha pa vezo tehet an oll bobl a zo gantañ, e skoin gand ar roue a vezo e-unan.

3. Lakaad a rin da zistrei an oll bobl-se, evel ma tistro eun den e-unan : rag te ne glaskez nemed eun den ; hag an oll bobl a vezo e peoh.

4. Al lavar-ze a oe kavet mad gand Absalom ha gand oll henaoued Izrael.

5. Koulskoude Absalom a lavaras : Galvit Kusai an Arac'hit, ha selaouom ivez petra a lavaro.

6. Ha pa oa deuet Kusai etrezeg Absalom, e lavaras Absalom dezañ : Evel-henn en-deus komzet Ac'hitofel : ha ni a dle ober evel ma en-deus lavaret, pe ne dleom ket ? Pe guzul a roez ?

7. Ha Kusai a lavaras da Absalom : N'eo ket mad ar huzul en-deus roet Ac'hitofel ar wech-mañ.

8. Ha Kusai a lavaras c'hoaz : Te a anavez da dad, te a oar penaoz an dud a zo gantañ a zo kreñv-braz, ha ma eo c'hwerro o halon, evel hini eun ourzez a ziboell en eur hoad, o veza ma eo bet kemeret he oursedigou : da dad ivez pehini a zo eur brezelriad mad, ne ehano ket gand e dud.

9. Marteze bremañ eo kuzet en eur heo, pe en eul leh all, dioh ma kav mad : ha mar kouez unan ahanoh da genta, neb e glevo a lavaro : Eul lazerez braz a zo bet greet e-touez ar bobl a heulie Absalom.

10. Ha kement den kaloneg, pere a zo heñvel ouz leoned, a vezo spontet-braz : rag oll bobl Izrael a oar penaoz da dad, hag ar re oll a zo gantañ, a zo tud a galon.

11. Setu eta ar huzul a gavan ar gwella : Stroll war-dro dit Izrael oll, adaleg Dan betek Bersabee, evel trêz ar mor pehini a zo diniver ; ha te a vezo en o hreiz.

12. Ha ni en em daolo warnezañ, e pe leh bennag ma vezo kavet ; hag e holoim anezañ, evel pa gouez ar gliz war an douar : he ne lezim ket zoken eun den euz ar re a zo gantañ.

13. Ma'z a en eur gêr bennag, oll Izrael a lakay kerdin tro-war-dro d'ar gêr-ze, ha ni a denno anezi en eur froud, heb ma chomo mên ebed anezi.

14. Hga Absalom, hag oll dud Izrael a lavaras : Gwelloh eo kuzul Kusai, an Ac'harit, eged kuzul Ac'hitofel : rag dre youl an Aotrou eo e oe dikaret kuzul Ac'hitofel, evid ma tegasje an Aotrou droug war Absalom.

15. Neuze Kusai a lavaras da Zadok ha da Abiatar ar veleien : Evel-henn hag evel-henn en-deus kuzuliet Ac'hitofel hag henaoued Izrael ; hag evel-henn hag evel-henn em-eus o huzuliet.

16. Hogen bremañ kasit raktal da lavaroud dezañ : Na chom ket henoz e kompezennou an distro ; hogen treuz heb dale, gand aon na ve kollet ar roue hag an oll bobl a zo gantañ.

17. Jonatas hag Ac'himaas a oa e-tal feunteun Rogel : hag eur vatez a yeas hag a lavaras kement-se dezo ; hag hi a yeas hag a zegasas ar helou d'ar roue David ; rag i ne hellent ket en em ziskoueza na mond e kêr.

18. Hogen eur paotr a welas anezo hag e lavaras da Absalom : hag i a yeas raktal da di eun den euz a Vaturim, pehini en-doa eur puñs e-tal dor e di ; hag i a ziskennas ennañ.

19. Hogen gwreg an den-ze a lakaas eur goulher war genou ar puñs, evel pa he-divije lakaet ed da graza ; hag e vel-se e kuzas-hi an dra.

20. Ha pa oa deuet servijerien Absalom d'an ti-ze, e leverjont d'ar wreg : Peleh ema Ac'himaas ha Jonatas ? Hag ar wreg a lavaras dezo : Buan int eet kuit, goude beza evet eun nebeud dour. Hag ar re o hlaske, pa n'o hevjont ket, a zistroas da Jeruzalem.

21. Ha pa oe eet ar re-ze kuit, ar re-mañ a zeuas er-mêz euz ar puñs, a yeas hag a zanevellas pep tra da Zavid, o lavaroud : Savit, ha treuzit buan ar ster ; rag evel-se eo en-deus roet Ac'hitofel kuzul en ho eneb.

22. David eta a zavas, hag an oll bobl a oa gantañ, hag i a dreuzas ar Jourdan a-barz goulou-deiz : ha ne chomas ket unan heb treuzi ar ster.

23. Pa welas Ac'hitofel penaoz ne oa ket bet heuliet e guzul, e tibras e azen, e pignas warnezañ, hag ez eas d'e di ha d'e gêr : hag o veza lakaet reiz en e di, en em grougas ; hag eñ a oe beziet e bez e dad.

24. Hogen David a zeuas d'ar hamp, hag Absalom a dreuzas ar Jourdan, eñ hag an oll dud euz a Izrael a oa gantañ.

25. Absalom a lakaas Amasa e penn an arme e leh Joab : Amasa a oa mab da eun den euz a Jezrael anvet Jetra, pehini a oa eet da gavoud Abigail, merh Naas, c'hoar Sarvia, mamm Joab.

26. Hag Izrael gand Absalom a stegnas e gamp e bro Galaad.

27. Ha pa oe deuet David d'ar hamp, Sobi, mab Naas, euz a Rabbat da vugale Ammon euz a Lodabar, ha Berzellai euz a Rogelim e Galaad,

28. A zegasas dezañ gweleou, ha pellennou, ha listri pri, ha gwiniz, hag heiz, ha bleud, hag ed kraz, ha fao, ha fer, ha piz kraz,

29. Ha mel, hag amann, ha deñved, ha leueou lard ; hag i o roas da Zavid, ha d'ar bobl a oa gantañ, evid debri : rag i a grede penaoz ar bobl a oa mantret gand an naon, gand ar sehed, ha gand ar skuizder en distro.

XVIII. Pennad.

Lazet eo Absalom.

1. David o veza evesaet ouz ar bobl a oa gantañ, a lakaas warnezo milinerien ha kantenerien ³⁴⁹;

2. Hag eñ a lakaas an drede lodenn euz ar bobl dindan dorn Joab, hag an drede lodenn dindan dorn Abisai, mab Sarvia ha breur da Joab, hag an drede lodenn dindan dorn Etai euz a Het ; hag ar roue a lavaras d'ar bobl : Me a yelo ivez er-mêz ganeoh.

3. Hag ar bobl a lavaras : Ne zeui ket er-mêz : rag pa o-defe ol lakaet da dehoud, ne gavje ket dezo beza greet kalz en on eneb : ha pa ve kouezet an hanter ahanom, ne ve ket c'hoaz a-walh evito : rag te da-unan a zo niveret evel deg mil. Gwelloh eo eta e chomfes e kêr evid kennerza ahanom.

³⁴⁹ milinerien ha kantenerien : tud e penn mil den ha tud e penn kant den.

4. Hag ar roue a lavaras dezo : Ar pezh a gavfot mad a rin. Hag eñ a chomas en e zav e-tal ar porz ; hag ar bobl a yee er-mêz a-vandennou, dre gant den ha dre vil den.

5. Hag ar roue a reas ar gourhemenn-mañ da Joab, da Abisai ha da Etai, o lavaroud : Mirit din va mab Absalom. Hag an oll bobl a glevas ar roue oh erbedi e oll briñsed evid Absalom.

6. Ar bobl eta a gerzas a-eneb Izrael, hag an emgann a oe roet e koad Efraim.

7. Hag eno e oe trehet Izrael gand arme David : ha braz e oe al lazerez en deiz-se ; euz a ugent mil den e oe.

8. Ha goude an emgann e oent skignet dre an oll vro ; ha kalz muioh anezo a oe lazet er hoad³⁵⁰, eged na oe lazet gand ar hleze en deiz-se.

9. Absalom e-unan a oe kavet gand tud David, hag eñ pignet war eur mul ; ha pa dremene ar mul dindan eun dervenn vraz ha bodeg, en em reustlas e benn en dervenn ; hag eñ o veza chomet a-ispill etre an neñv hag an douar, ar mul war pehini e oa pignet a yeas e-biou.

10. Hogen eur re a welas kement-se, hag e zanevellas da Joab, o lavaroud : Gwelet em-eus Absalom, hag eñ krouget ouz eun dervenn.

11. Ha Joab a lavaras d'an hini en-doa danevellet an dra-ze dezañ : Ma eh-eus e welet, perag n'eh-eus ket e doulet beteg an douar ? Ha me em-bije roet dit deg sikl arhant hag eur gouriz-kleze.

12. Hag hemañ a lavaras da Joab : Ha pa bouezfes em dorn mil pezh arhant, ne lakajen va dorn war mab ar roue : rag klevet on-eus oll ar pezh en-deus gourhemennet ar roue dit, ha da Abisai, ha da Etai, o lavaroud : Mirit din va mab Absalom.

13. Ha m'am-bije greet kement-se e gwall va buhez, ne vije ket bet gallet e guza ouz ar roue ; ha savet e vijes-te en e eneb ?

14. Ha Joab a lavaras : Ne rin ket diou da youl ; hogen e daga a rin dirazout. Kemeroud a reas eta tri daret en e zorn, hag eñ a zankas anezo e kalon Absalom. Hag o veza ma oa c'hoaz beo, hag eñ krouget ouz an dervenn,

15. Deg floh yaouank Joab a ziredas, a skoas gantañ, hag e lasas.

16. Hogen Joab a lakaas ar horn-boud da zeni, hag a zalhas ar bobl, evid n'ez aje ket mui war-lerh Izrael a dehe ; rag eñ a felle dezañ kaoud azaouez evito.

17. Hag Absalom a oe kemeret ha taolet en eur poull braz er hoad, hag e oe savet warnezañ eur bern braz a vein : hag oll Izrael a dehas pep hini d'e delt.

18. Hogen Absalom en-doa savet evitañ, endra ma oa c'hoaz beo, eur peul e traonienn ar roue : rag eñ a lavare : N'em-eus ket a vab, hag an dra-ze a vezo da zerhel soñj euz va ano. Hag eñ a halvas ar peul diou e ano : ha dorn Absalom eo bet anvet beteg-henn.

19. Neuze Ac'himaas, mab Sadok, a lavaras : Mond a ran da redeg etrezeg ar roue, hag e roin da anaoud dezañ penaoz an Aotrou en-deus e dennet euz a zaouarn e enebourien.

20. Ha Joab a lavaras dezañ : Ne vezi ket da gannad hirio, hogen eur wech all e vezi da gannad : ne fell ket din da gas da gannad hirio, o veza ma eo maro mab ar roue.

21. Ha Joab a lavaras da Gusi : Kee, ha lavar d'ar roue ar pezh eh-eus gwelet. Ha Kusi a stouas dirag Joab, hag a redas.

22. Hogen Ac'himaas, mab Sadok, a lavaras c'hoaz da Joab : Petra a vir na redan ivez war-lerh Kusi ? Ha Joab a lavaras dezañ : Perag e fell dit redeg, va mab ? Ne zougi ket eur helou mad.

³⁵⁰ kalz muioh anezo a oe lazet er hoad : lazet e oent bet gand ar hoad.

23. Ha ma redan ? eme Ac'himaas. Ha Joab a lavaras dezañ : Red. Hag Ac'himaas, o redeg dre eun hent berroh, a yeas e-biou da Gusi.

24. Hogen David a oa azezet etre an daou borz³⁵¹ : hag an eveziad pehini a oa war lein ar porz war ar vur, o sevel e zaoulagad, a welas eun den a rede e-unan³⁵².

25. Hag eñ a grias hag e lavaras d'ar roue. Hag ar roue a lavaras : Mar dema e-unan, e teuy ar helou mad euz e henou. Ha pa haste hemañ, ha pa edo tost,

26. An eveziad a welas eun den all hag a rede ; hag o krial diwar-laez, e lavaras : Eun den all a welan hag a red e-unan. Hag ar roue a lavaras : Eur helaouer mad eo ivez.

27. Hag an eveziad a lavaras : Gweloud a ran ar henta o redeg, evel ma red Ac'himaas, mab Sadok. Hag ar roue a lavaras : Eun den mad eo ; hag eur helou mad a zegas.

28. Hogen Ac'himaas en eur grial a lavaras d'ar roue : Me az salud, o roue ! ; hag o veza azeulet oh en em strinka war e henou d'an douar dirag ar roue, e lavaras : Benniget ra vezo an Aotrou da Zoue, pehini en-deus trehet ar re o-doa savet o daouarn a-eneb an aotrou, va roue.

29. Hag ar roue a lavaras : Ha saveteet eo va mab Absalom ? Hag Ac'himaas a lavaras : Gwelet em-eus eun dispah braz pa en-deus Joab da zervijer va haset etrezeg ennout, o roue ! ; ha ne ouzon netra ken.

30. Hag ar roue a lavaras dezañ : Kee e-biou, ha chom aze en da zav. Ha pa oa eet e-biou, ha chomet en e zav,

31. E oe gwelet Kusi ; hag o tond e lavaras : Eur helou mad a zegasan, aotrou, va roue : rag an Aotrou en-deus hirio barnet en da hounid, ha da dennet euz a zaouarn ar re oll a oa savet en da eneb.

32. Hag ar roue a lavaras da Gusi : Ha saveteet eo va mab Absalom ? Ha Kusi a lavaras : Ra vezo greet da enebourien an aotrou, va roue, ha d'ar re oll a zav en e eneb evid an droug, evel ma eo bet greet d'az mab.

33. Neuze ar roue a oe glaharet-braz, a bignas er gambr a-zioh ar porz, hag a ouelas. Hag evel-henn e lavare en eur vond : Va mab Absalom, Absalom va mab : piou a lakay ahanon da vervel evidout, Absalom va mab, va mab Absalom ?

XIX. Pennad.

Joab a laka David d'en em ziskoueza d'ar bobl.

Mifiboset a zo degemeret gand ar roue.

1. Hogen e oe roet da anaoud da Joab penaoz ar roue en em hlahare hag a ouele e vab :

2. Hag ar gounid³⁵³ a oe troet e kañv en deiz-se e-touez an oll bobl ; rag ar bobl a glevas lavaroud en deiz-se penaoz e oa glaharet ar roue en abeg d'e vab.

3. Hag ar bobl en em dennas e kêr en deiz-se, evel ma en em denn eur bobl a zo bet trehet hag a deh euz an emgann.

4. Hogen ar roue en-doa goloet e benn, hag a grie a-bouez-penn : va mab Absalom, Absalom va mab, va mab.

³⁵¹ an daou borz : an diou zor.

³⁵² e-unan : e-unan-penn.

³⁵³ ar gounid : an treh.

5. Ha Joab a yeas da gavoud ar roue en e di, hag a lavaras dezañ : Mezekaet eh-eus hirio da oll zervijerien pere o-deus saveteet da vuhez, ha buhez da vibien ha da verhed, ha buhez da wragez ha da wragez-serhed.

6. Te a gar ar re az kasa, ha te a gasa ar re az kar. Te a ziskouez hirio penaoz n'ez eus azaouez ebed evid pennou da arme nag evid da zervijerien : ha me a anavez ervad penaoz ma vije beo Absalom, ha ma vijem-ni maro oll, bremañ e vijes laouen.

7. Hogen bremañ sao, ha tosta, ha komz gand trugarez ouz da zervijerien ; rag me a dou dit, dre an Aotrou, penaoz ma ne zeuez ket er-mêz, ne chomo ket eun den hepken ganez en noz-mañ : ha gwasoh e vezo kement-se dit eged an oll zrougou a zo bet c'hoarvezet ganez, abaoe pa oas yaouank beteg-henn.

8. Ar roue eta a zavas hag a azezas e-tal ar porz : ha roet e oe da anaoud d'an oll bobl penaoz e oa azezet ar roue e-tal ar porz ; hag an oll bobl a zeuas dirag ar roue ; hogen Izrael a oa tehet pep hini d'e delt.

9. Hag an oll bobl a strive³⁵⁴ e oll vreuriezu Izrael, o lavaroud : Ar roue en-deus on tennet euz a zaouarn on enebourien ; on tennet en-deus euz a zaouarn ar Filistined ; ha bremañ e teh euz ar vro en abeg da Absalom.

10. Hogen Absalom, pehini or-boa eouliet warnom³⁵⁵, a zo maro er brezel ; beteg pegeid e tavot-hu, ha na zegasot ket ar roue adarre ?

11. Hogen ar roue David a gasas etrezeg Sadok hag Abiatar ar veleien-vraz, evid lavaroud dezo : Komzit ouz henaoued Juda, o lavaroud : Perag e teuit-hu da-ziweza da zegas ar roue en e di ? (Rag lavar oll Izrael a oa bet klevet gand ar roue en e di).

12. Va bredeur oh, va eskern ha va hig oh ; perag oh-hu ar re ziweza o tegas adarre ho roue ?

13. Livirit hirio da Amasa : Ha n'out-te ket va eskern ha va hig ? Ra ray Doue kement-se din³⁵⁶, ha c'hoaz ohpenn, ma n'az lakaan da viken da vestr war va arme e leh Joab.

14. Hag eñ a houezas kalon oll dud Juda, evel kalon eun den hepken : hag i a gasas d'ar roue, o lavaroud : Distro te, ha da oll zervijerien.

15. Ar roue eta a zistroas, hag a zeuas beteg ar Jourdan ; hag oll Juda a zeuas beteg Galgala a-raog ar roue, evid e lakaad da dreuzi ar Jourdan.

16. Hogen Semei, mab Gera, mab Jemini, euz a Vahurim, a zeuas afo hag a ziskennas gand tud Juda a-raog ar roue David,

17. Gand mil den euz a Venjamin : ha Siba, paotr euz a di Saul, a zeuas ivez, hag e bemzeg mab, hag ugent servijer a oa gantañ : hag i o treuzi ar Jourdan a-raog ar roue,

18. A drementas ar gweviou³⁵⁷, evid lakaad da dreuzi ti ar roue, hag evid ober diogh e hourhemenn. Semei eta, mab Gesa, a stouas dirag ar roue pa dreuze ar Jourdan,

19. Hag a lavaras dezañ : Na rez ket din hervez va fallagriez, va aotrou ; ha n'az-pezh ket a goun euz a wallou da zervijer en deiz ma out eet er-mêz euz a Jeruzalem, aotrou va roue : ha na vir ket kement-se en da galon.

20. Rag me, da zervijer, a anavez va fehed : ha rag-se eo on deuet hirio ar henta euz a oll di Jozef, hag on diskennet a-raog an aotrou, va roue.

21. Hag Abizai, mab Sarvia, a respontas hag a lavaras : Ha ne vezo ket laz et Semei evid ar geriou-ze, pa en-deus milliget eouliet an Aotrou ?

22. Ha David a lavaras : Petra a zo etre c'hwi ha me, mibien Sarvia ? Perag e teuit-hu da enebourien din hirio ? Hag hirio e tle beza laz et eun den e Izrael ? Ha ne ouzon-me ket penaoz eo hirio on bet lakaet da roue war Izrael ?

³⁵⁴ a strive : a abege.

³⁵⁵ or-boa eouliet warnom : or-boa eouliet evid ma vefe roue warnom.

³⁵⁶ kement-se din : ra vin kastizet.

³⁵⁷ ar gweviou : ?

23. Hag ar roue a lavaras da Semei : Ne varvi ket ; hag eñ hen touas dezañ.
24. Mifiboset, mab Saul, a ziskennas ivez a-raog ar roue, heb beza gwalhet e dreid, na beza trohet e varo ; ha n'en-doa ket gwalhet e zillad abaoe an deiz e pehini e oa eet kuit ar roue, beteg an hini ma tistroas e peoh.
25. Ha pa oe deuet da ziambrouga ar roue e Jeruzalem, e lavaras David dezañ : Perag, Mifiboset, n'out ket deuet ganen ?
26. Hag hemañ a lavaras dezañ : Aotrou va roue, va zervijer en-deus va zouellet ; ha me da zervijer em-eus lavaret dezañ dibra din eun azen, evid pigna warnezañ ha mond war-lerh ar roue, o veza ma on kamm, me da zervijer.
27. E-leh se eo eet da damalloud ahanon, da zervijer, dirazout, o va roue ! : hogen te, aotrou va roue, a zo evel eun êl Doue : gra ahanon ar pez a giri.
28. Rag petra bennag ma oa oll di va zad dellezeg a varo e-keñver an aotrou va roue, eh-eus va lakaet, me da zervijer, da zebri ouz da daol : pe wir em-be-me 'ta d'en em glemma ? Pe da betra e teufen-me pelloh da harmi ouz va roue ?
29. Hag ar roue a lavaras dezañ : Petra a lavarfes ohpenn ? Ar pez am-eus lavaret a chomo : Te ha Siba, rannit ar madou.
30. Ha Mifiboset a lavaras d'ar roue : R'o hemero oll, pa eo deuet hirio e peoh an aotrou va roue en e di.
31. Berzellai euz a Halaad a ziskennas ivez euz a Rogelim, a dreuzas ar Jourdan gand ar roue, hag a oa dare da vond war e lerh en tu all d'ar ster.
32. Hogen Berzellai euz a Halaad a oa koz-braz, da lavaroud eo en-doa pevar-ugent vloaz. Boued en-doa roet d'ar roue, pa en em gave er hamp ; rag eun den pinvidig-braz e oa.
33. Ar roue eta a lavaras da Verzellai : Deus ganen, evid ma chomi e peoh ganen e Jeruzalem.
34. Ha Berzellai a lavaras d'ar roue : Ped bloaz a chom din c'hoaz da veva, evid ma hellfen pigna da Jeruzalem gand va roue ?
35. Pevar-ugent vloaz on hirio : ha kreñv a-walh eo va skiantchou evid anaoud ar c'hwek dioh ar c'hwero ? Evid tañva ar boueta hag an eva, evid selaoui mouez ar ganerien hag ar hanerezed ? Perag da zervijer a ziêzfe an aotrou va roue ?
36. Mond a rin c'hoaz eun nebeud war da lerh en tu all d'ar Jourdan, me da zervijer : hogen n'em-eus ket talvezet an distro-ze.
37. Hogen va lez, me da zervijer, da zistrei evid ma varvin em hêr, ha ma vezin beziet e bez va zad ha va mamm. Hogen bez' eh-eus Kamaam da zervijer : eñ a yelo ganez, aotrou va roue ; ha gra dezañ evel ma kiri.
38. Hag ar roue a lavaras : Ra dremeno Kamaam ganen ; ha me a ray dezañ ar pez a giri : ha me a roy dit ar pez a houlenni.
39. An oll bobl hag ar roue a dreuzas ar Jourdan : hag ar roue a bokas da Verzellai hag a vennigas anezañ ; hag hemañ a zistroas d'e di.
40. Neuze ar roue a yeas da Halgala, ha Kamaan gantañ. Pa oe treuzet ar Jourdan gand ar roue, oll bobl Juda a ambrougas anezañ, hag an hanter hepken euz a bobl Izrael.
41. Ha setu oll dud Izrael a ziredas etrezeg ar roue, hag a lavaras dezañ : Perag or breudeur tud Juda o-deus-i da laeret³⁵⁸, ha lakaet ar roue hag e di da dreuzi ar Jourdan, hag oll dud David gantañ ?
42. Hag oll dud Juda a lavaras da dud Izrael : O veza ma eo ar roue nesoh deom. Perag e sav droug ennoh diwar-benn kement-se ? Ha debret on-eus-ni netra diwar goust ar roue ? Pe greet ez eus roue deom ?

³⁵⁸ da laeret : skrapet.

43. Ha tud Izrael a lavaras da dud Juda : Deg kwech muioh om egedoh dirag ar roue ; rag-se David a zo muioh deom eged deoh. Perag hoh-eus-hu greet an dismegañs-se deom, ma n'eo eñ ket bet roet da anaoud deom da genta e tleem degas or roue ? Hogen tud Juda a gomzas gand mui a harventez ouz tud Izrael.

XX. Pennad.

En em zevel a ra Seba ouz David.

1. C'hoarvezoud a reas ivez penaoz en em gavas eno eun den euz a Vetial, anvet Seba, mab Bokri, euz a Jemini ; hag eñ a zonas gand ar horn-boud, hag a lavaras : N'on-eus ket a lod gand David, ha n'on-eus ket a zegouez gand mab Isai. Distroit d'ho teltou, Izrael.

2. Evel-se Izrael oll en em rannas dioh David, hag a yeas war-lerh Seba, mab Bokri : hogen tud Juda en em stagas ouz ar roue adaleg ar Jourdan beteg Jeruzalem.

3. Pa oe deuet ar roue en e di e Jeruzalem, e kemeras an deg gwreg-serh en-doa lezet evid diwall an ti ; hag eñ a lakaas o has en eur vah, e peleh e kasas boued dezo, ha n'ez eas mui d'o havoud ; hogen i a chomas serret, hag a vevs evel intañvezed ken na varvjont.

4. Neuze ar roue a lavaras da Amasa : Stroll din oll dud Juda a-benn tri deiz ; ha deus ivez ganto.

5. Amasa a yeas eta evid strolla Juda, hag eñ a chomas pelloh amzer eged n'en-doa aotreet ar roue dezañ.

6. Hogen David a lavaras da Abisai : Seba, mab Bokri, a ya da hlahari ahanom bremañ mui eged n'en-deus greet Absalom : kemer eta tud da aotrou, ha kee war e lerh, gand aon na gavje or hêriou-kreñv, ha na dehje diouzom.

7. Tud Joab eta, hag ar Seretied, hag ar Feletied, a yeas gantañ : hag ar re galoneg oll euz a Jeruzalem a yeas war-lerh Seba, mab Bokri.

8. Ha pa oant e-tal ar mên braz a zo e Gabaon, en em gavas Amasa ganto. Hogen Joab en-doa eur zae striz war e gorv hervez e giz, ha war-horre e oa gourizet gand eur hleze a oa 'ispill war e gostez, en eur gouin, pehini a oa greet en eun doare ma helle beza tennet ha skei gand eur fiñv skañv.

9. Joab eta a lavaras da Amasa : Deiz mad dit, va breur. Hag eñ a grogas gand e zorn dehous e helgez Amasa evel evid poki dezañ.

10. Hogen Amasa ne lakaas ket a evez ouz ar hleze en-doa Joab : hag hemañ a skoas gantañ en e gostez, hag a lakaas e vouzellou da goueza d'an douar : ha ne skoas ket eun eil taol, hag eñ a varvas. Neuze Joab hag Abisai e vreur a yeas war-lerh Seba, mab Bokri.

11. Ha koulskoude lod euz a dud Joab, pere a oa chomet e-tal korv maro Amasa, a lavaras : Setu an hini a felle dezañ beza da rener da Zavid e-leh Joab.

12. Hogen Amasa, goloet a wad, a oa gourvezet e-kreiz an hent. Hag eur re o weloud penaoz e chome an oll bobl en e zav evid selloud outañ, a vountas anezañ euz an hent en eur park, hag a holoas anezañ gand eur vantell, gand aon na chomfe en o zav ar re a dremene, en abeg dezañ.

13. Pa oe eta tennet diwar an hent, an oll a yeas gand Joab war-lerh Seba, mab Bokri.

14. Hogen eñ o treuzi oll vreuriezu Izrael, a yeas da Abela, ha da Vetmaac'ha : hag an oll dud zilennet en em strollas en e dro.

15. Dond a rejont eta, hag e stourmjont outañ e Abela hag e Betmaac'ha ; hag i a zavas kombodou³⁵⁹ war-dro da gêr, ha gronnet e oe kêr ; hag ar re oll a oa gand Joab a galske an doare da ziskara ar vur.

16. Hag eur vaouez fur euz a gêr a grias : Selaouit, selaouit, ha livirit da Joab : Tosta amañ, ha me a gomzo ouzit.

17. Ha pa oe tasteet-eñ, e lavaras-hi dezañ : Ha te eo Joab ? Hag eñ a lavaras : Me eo. Hag hi a lavaras dezañ : Selaou komziou da vatez. Hag eñ a lavaras : O selaoui a ran.

18. Hag hi a lavaras c'hoaz : En eul lavar koz e lavared : Neb a houlenno kuzul, ra houlenno e³⁶⁰ Abela : hag evel-se e teuent a-benn euz o zra.

19. Ha n'eo ket me eo a lavar ar wirionez en Izrael ? Ha te a fell dit dismantra kêr, ha diskara ar vamm e Izrael. Perag e fell dit kas da get degouez an Aotrou ?

20. Ha Joab a respontas hag a lavaras : Doue ra viro, Doue ra viro : ne zeuan nag evid dismantra nag evid diskara.

21. N'eus ket a veneg euz a gement-se ; hogen eun den euz a venez Efraim, anvet Seba, mab Bokri, a zo en em zavet a-eneb ar roue David. Laka eñ hepken etre on daouarn, ha ni a bellay diou kêr, hag ar vaouez a lavaras da Joab : Setu ez eer da deurel e benn dit dreist ar vur.

22. Neuze ez eas-hi da gavoud ar bobl, hag e komzas outo³⁶¹ gand furnez : hag hi o veza trohet penn Seba, mab Bokri, a daolas anezañ da Joab. Hag eñ a zonas gand ar horn-boud, hag hi a zistroas euz a-zirag ar gêr, hag en em dennas dindan he zelt. Hogen Joab a zistroas da gavoud ar roue e Jeruzalem.

23. Joab eta a oa e penn oll arme Izrael ; ha Banaias, mab Joiada, war ar Seretied hag ar Feletied.

24. Aduram a oa da benn war an teltou, ha Josafat, mab Ahilud, war an diellou.

25. Siva a oa ar skrivagner ; ha Sadok hag Abatiar beleien-vraz.

26. Hag Ira euz a Jair a oa beleg³⁶² da Zavid.

XXI. Pennad.

Naonegez en Izrael. David a laka da vezia eskern Saul ha Jonatas.

1. E amzer David e oe eun naonegez hag a badas tri bloaz. Ha David a houlennas kuzul digand an Aotrou. Hag an Aotrou a lavaras : En abeg da Zaul eo, ha d'e di, a oa eun ti a wad ; o veza ma en-deus lazet ar Habaonited.

2. Hogen ar roue o veza galvet ar Habaonited, a lavaras dezo : (Rag ar Habaonited ne oant ket bugale Izrael, hogen eul lodenn diweza euz an Amorreed. Bugale Izrael o-doa greet eul le dezo, ha koulskoude Saul a fellas dezañ o heskina, evel eun abeg da vugale Izrael ha Juda).

3. David a lavaras eta d'ar Habaonited : Petra a rin-me deoh ? Ha petra a vezo da zihaou deoh, evid ma venniget degouez an Aotrou ?

4. Hag ar Habaonited a lavaras dezañ : Ne houlennom nag arhant nag aour, hogen ni a houlenno barn a-eneb Saul hag e di : ha ne fell ket deom e ve lazet eun den en Izrael. Hag ar roue a lavaras dezo : Petra eta a fell deoh e rajen evidoh ?

³⁵⁹ kombodou : savennou.

³⁶⁰ e : digand.

³⁶¹ outo : ouz tud ar bobl.

³⁶² beleg : war a hañval e talv "beleg" kement ha "ministr braz" gwechou 'zo.

5. Hag i a lavaras d'ar roue : Ni a dle kas da get an hini en-deus on heskinet hag or gwasket, en heveleb doare na chomo ket hepken unan euz o gouenn e oll harzou Izrael.

6. Ra vezo roet deom seiz den euz e vibien, evid ma krougim anezo d'an Aotrou e Gabsa-Saul, a oa gwechall dilennet an Aotrou³⁶³. Hag ar roue a lavaras : Me o roy.

7. Hogen ar roue a espernas Mifiboset, mab Jonatas, mab Saul, en abeg da le an Aotrou, a oa bet etre David ha Jonatas, mab Saul.

8. Ar roue a gemeras eta daou vab Resfa, merh Aia, he-doa bet euz a Zaul, Armoni ha Mifiboset : ha pemp mab Michol, merh Saul, he-doa bet euz a Hadriel, mab Berzeliai, a oa euz a Volati.

9. Hag eñ o lakaas etre daouarn ar Habaonited : hag i a grougas anezo war eur menez dirag an Aotrou : hag i o-zeiz a gouezas, hag a oe lazet war eun dro en deiziou kenta euz ar mederez, pa edod o vond da vedi an heiz.

10. Hogen Resfa, merh Aia, o veza kemeret eur zae-reun, a astennas anezi eviti war eur mên, adaleg derou ar mederez, beteg ma kouezas dour warnezo euz an neñv : hag o a viras³⁶⁴ ouz an evned na rojgent anezo e-pad an deiz, ha na raje al loened e-pad an noz.

11. Ha roet e oe da anaoud da Zavid ar pez he-doa greet Resfa, merh Aia, gwreg-serh Saul.

12. Ha David a yeas hag a zegasas eskern Saul, hag eskern Jonatas e vab, a oa etre daouarn tud Jabez-Galaad, pere o-doa o laeret e Betsan, e peleh e oant bet krouget gand ar Filistined pa lazjont Saul e Gelboe.

13. Hag eñ a zegasas ahano eskern Saul, hag eskern Jonatas e vab : ha goude beza dastumet eskern ar re a oa bet krouget,

14. E vezjont anezo gand eskern Saul ha Jonatas e vab, e bro Benjamin, e Seba, e bez Kis, e dad : hag i a reas kement en-doa gourhemennet ar roue ; ha goude-ze Doue en-doe truez ouz ar vro.

15. Ar Filistined a reas adarre brezel a-eneb Izrael ; ha David a ziskennas, hag e zervijerien gantañ, hag a stourmas ouz ar Filistined. Hogen David o veza deuet da veza skuiz,

16. Jesbibenob, pehini a oa euz a ouenn Arafa, pehini a zouge eur goaf hag an houarn anezañ a boueze tri-hant oñs, ha pehini en-doa ouz e houriz eur hleze nevez, a strivas da laza David.

17. Hogen Abisai, mab Sarvia, a zeuas d'o skoazia, a skoas gand ar Filistin, hag a lazas anezañ. Neuze tud David a douas dezañ, o lavaroud : Ne zeui mui ganeom d'ar brezel, gand aon na vougfes goulou Izrael.

18. Eun eil brezel a oe ivez e Gob a-eneb ar Filistined : eno eo e lazas Soboc'hai euz a Husati, Saf, mab Arafa euz a ouenn al langouineien.

19. Eun trede brezel a oe ivez e Gob a-eneb ar Filistined ; e pehini Elkanan, mab Jare-orgim, euz a Vetlehem, a lazas Goliat ar Getead, pehini en-doa eur fust goaf evel karvan ar wiaderien.

20. Eur pevare brezel a oe e e Get ; hag ennañ en em gavas eun den braz-meurbed, pehini en-doa c'hweh biz ouz peb dorn hag oh pep troad, da lavaroud eo, pevar biz warn-ugent, hag a oa euz a ouenn Arafa.

21. Ar pevar den-ze a oa ganet euz a Arafa euz a Het ; hag i a gouezas dindan dorn David, pe dindan dorn e zervijerien.

³⁶³ a oa gwechall dilennet an Aotrou : dilennet gand an Aotrou.

³⁶⁴ hag o a viras : hag e viras anezo

XXII. Pennad.

Kanaouenn David evid trugarekaad Doue da veza e dennet euz a zaouarn e oll enebourien.

1. Hogen David a lavaras geriou ar ganaouenn-mañ d'an Aotrou, en deiz e pehini e tennas an Aotrou anezañ euz a zaouarn e oll enebourien, hag euz a zaouarn Saul.
2. Hag eñ a lavaras : An aotrou eo va roh, ha va nerz, ha va Zalver.
3. Doue a zo va skoazell, ha me a fizio ennañ : va zirenn eo³⁶⁵, ha galloud va zilvidigez : va gorreer³⁶⁶, ha va gwarez : va Zalver ; euz ar fallagriez e tieubi ahanon.
4. Gervel a rin an Aotrou a zo da veza meulet, ha va zenna a ray euz a zaouarn va oll enebourien.
5. O veza ma on bet kelhiet gand ankennou³⁶⁷ ar maro, ha ma on bet saouzanet gand froudou Belial³⁶⁸.
6. Ereou an ivern o-deus va strobet : lingadou ar maro o-deus va helhiet.
7. Em glahar e halvin an Aotrou, hag e harmin etrezeg va Doue ; hag eñ a glevo va mouez euz e dempl, ha va hri a yelo beteg e ziskouarn.
8. An douar a zo bet keflusket, hag en-deus krenet : soliou ar menezioù a zo bet keflusket hag horellet ; o veza ma'z eus eet droug en Aotrou en o eneb.
9. Moged a zo savet euz e zifronn, hag eun tan a zev a zo deuet er-mêz euz e henou : glaou a zo deuet ruz-tan dioutañ.
10. Izellaet eo an neñvou gantañ, ha diskennet eo : hag an deñvalijenn a zo dindan e dreid.
11. Hag eñ a zo bet pignet war ar cherubined, hag a zo bet nijet ; ha diskennet eo war ziuaskell an avel.
12. Lakaet en-deus an deñvalijenn en-dro dezañ evid en em guza : lakaet en-deus doureier da zivera euz a goumoul an neñvou.
13. Gand ar sked a zo dirazañ, e teu ar glaou da veza ruz-tan.
14. An Aotrou en-deus greet kurun euz an neñv ; hag an Uhel-meurbed en-deus savet e vouez.
15. Kaset en-deus e zaezioù, hag eñ en-deus o skignet ; e gurun, hag eñ en-deus o devet.
16. Goueled ar mor a zo en em ziskouezet, ha sol ar bed a zo bet dizoloet gand gourdrouz an Aotrou, gand eur hwezadenn euz a avel e vuanegez.
17. Kaset en-deus diwar-laez, hag en-deus va gorreet, hag en-deus va zennet euz a galz a zoureier.
18. Va zennet en-deus euz a zaouarn va enebour galloudeg-braz, hag euz ar re a gasee ahanon, o veza ma oant kreñvoh egedon.
19. Em raog eo deuet e deiz va glahar, hag an Aotrou a zo deuet da skoazell greñv din.
20. Va dienket en-deus ; va diboaniet en-deus, o veza ma em-eus plijet dezañ.
21. An Aotrou a zistaolo din hervez va reiz : hag hervez glanded va daouarn e roy din.
22. Rag miret em-eus heñchou an Aotrou, ha n'on ket bet fallagr e-keñver va Doue.

³⁶⁵ va zirenn eo : ? Marteze "va skoed".

³⁶⁶ va gorreer : ? Marteze "al leh uhel leh ma'z on dieub".

³⁶⁷ ankennou : ? "ankenioù".

³⁶⁸ froudou Belial : ? "froud an distruj".

23. Rag e oll varnedigeziou a zo bet dirazon : ha n'em-eus ket pelleet diouzin e gelennou.
24. Ha me a vezo oll gantañ : hag en em virin dioh va fallagriez.
25. Hag an Aotrou a zistaolo din hervez va reiz, hag hervez glanded va daouarn dirag e zaoulagad.
26. Gand ar zent e vezi sant, ha klok gand ar re greñv.
27. Gand ar re hlan e vezi glan : ha gand ar re fallagr e teui da veza fallagr.
28. Ar bobl paour a zieubi : hag en eun taol lagad eh izellai ar re rok.
29. Rag te eo va hleuzeur, o ! Aotrou ; ha te eo, o ! Aotrou, a sklêrray va zeñvalijenn.
30. Rag ganez e redin ha me gourizet evid an emgann : gand va Doue e lammin dreist ar vur.
31. Eeun eo hent an Aotrou ; gand an tan eo arnodet ger an Aotrou : eñ a zo an direnn euz ar re oll a laka o fiziañs ennañ.
32. Rag piou a zo Doue nemed an Aotrou : ha piou a zo kreñv nemed on Doue ?
33. On Doue pehini en-deus lakaet an nerz war va zro : hag en-deus kompezet va hent.
34. Pehini a laka va zreid heñvel ouz treid kirvi : hag am laka da zevel en uhella ahanon.
35. Pehini a zesk va daouarn d'ar brezel ; hag a laka va divreh evel eur wareg arem.
36. Roet eh-eus din tirenn da zieubi, ha dre da vadelez n'o-deus ket horellet.
37. Ledannaet eh-eus an hent dindan va zreid : ha va zeulioù n'o-deus ket horellet.
38. Mond a rin war-lerh va enebourien, ha me o zreho : ha ne zistroin ket ken n'am-bezo o haset da get.
39. Me o haso da get, hag o brevo, evid na zavint mui : koueza a raint dindan va zreid.
40. Lakaet eh-eus nerz en-dro din evid ar brezel : lakaet eh-eus da blega dindanon ar re a enebe ouzin.
41. Lakaet eh-eus da drei kein va enebourien hag ar re a gasee ahanon : ha me o haso da get.
42. I a harmo, ha den ne zieubo anezo : ouz an Aotrou e harmint, ha ne zelaouo ket anezo.
43. O foeltra a rin evel poultr an douar : o frika hag o flastra a rin evel fank ar ruiou.
44. Va dieubi a ri euz a enebiezou va fobl : va miroud a ri da benn war ar broadou : eur bobl ha na anavezan ket a zervijo ahanon.
45. Tud a-ziavêz a enebo ouzin ; pa glevint va mouez e sentint ouzin.
46. Tud a ziavêz a deuzo hag a greno en o heviou.
47. Beo eo an Aotrou, ha benniget eo va Doue : an Doue kreñv, Doue a zizoan ahanon, ra vezo meulet.
48. Doue pehini a ro veñjañs din, hag a ziskar ar poblou dindanon,
49. Pehini a denn ahanon euz a-greiz va enebourien, hag a zav ahanon dreist ar re a eneb ouzin : euz an den droug e tieubi ahanon.
50. Dre ze, Aotrou, eh anzavin ahanout dirag ar Jentiled, hag e kanin da ano.
51. Te pehini a a ziskouez da veurded o tieubi da roue, oh ober trugarez da Zavid da eouliet, ha d'e ouenn da viken.

XXIII. Pennad.

Geriou diweza David. Anoiou ar re galoneka euz e arme.

1. Setu geriou diweza David ? Setu petra en-deus lavaret David, mab Isai ; petra en-deus lavaret an den-ze, pehini a zo bet lakaet da eouliet Doue, Jakob, kaner kaer Izrael.
2. Spered an aotrou en-deus komzet drezon, hag e lavar a zo bet war va zeod.
3. Doue Izrael en-deus komzet ouzin, an hini kreñv euz a Izrael en-deus lavaret din : Neb a hourhemenn war an dud, ra vezo eeun ha leal ; ra hourhemennno gand doujañs Doue.
4. Ra vezo evel goulou-deiz, pa zav an heol dioh ar mintin hep koumoul, hag evel ar geot a egin en douar gand ar glao.
5. N'eo ket braz va zi dirag Doue, ma raje ganen eur gevredigez peurbaduz, eur gevredigez stard ha digeflusk. Rag va oll zieub ha va oll youl eo : ha n'eus netra anezo ha n'eo bet sevenet.
6. Hogen ar wallerien a vezo diframmet oll evel an drein, pere na denner ket gand an daouarn.
7. Hogen mar fell da eur re steki outo, e kemer da zivenn eun tamm houarn, pe eur fust prenn, pe e laka an tan enno ken n'en-deus o haset da get.
8. Setu amañ anoiou ar re galoneka a oa gand David. Adino, an Hesnitad, a zo ar henta euz an tri furra euz ar briñsed. Azeza a reas war ar gador ; ha petra bennag ma oa gwan evel eur preñv koad, e lazas eiz-kant den eur wech.
9. Goude hemañ, Eleazar, Ahobitad, mab Dodo, a oe an eil euz ar re galoneka euz an tri en em gavas gand David, pa oe heskinet ar Filistined, ha ma en em strollas ar remañ evid an emgann.
10. Ha pa oe pignet bugale Izrael, eñ a chomas, hag a skoas gand ar Filistined, ken na oe skuiz e zorn, ha na oa reudet ouz e gleze : hag an Aotrou a reas eun dieub braz en deiz-se ; hag ar bobl he-doa tehet, a zistroas evid kemeroud diwisk ar re lazet.
11. Ha goude hennez, Semma, mab Age, euz a Arari. Ar Filistined a oa en em strollet en eur hreñv : hag eno e oa eur park ledan a fer³⁶⁹. Ha pa oe tehet ar bobl a-zirag ar Filistined,
12. E chomas-eñ e-kreiz ar park, hag e tiwallas anezañ ; hag eñ a drehas ar Filistined. Hag an Aotrou a reas eun dieub braz.
13. Hag an tri a oa da benn war an tregont³⁷⁰ a ziskennas, hag a yeas da gavoud David e amzer ar mederez e keo Adollam : hogen kamp ar Filistined a oa stegnet e traonienn al langouineien.
14. Ha David a oa en eur hreñv ; ha gward ar Filistined a oa neuze e Betlehem.
15. Hogen David en-doe eur c'hoant, hag a lavaras : O ! ma roje eur re din dour da eva euz a buñs Betlehem, a zo e-tal ar porz !
16. An tri den kaloneg-se a yeas eta a-dreuz da gamp ar Filistined, hag a dennas dour euz a buñs Betlehem, a oa e-tal ar porz, hag e zegasjont da Zavid : hogen eñ ne fellas ket dezañ e eva ; hag e kinnigas anezañ d'an Aotrou,
17. O lavaroud : Ra viro an Aotrou na rajen kement-se : hag eva a rajen gand an dud-se, a zo eet en hent evidon e gwall o buhez ? Ne fellas ket eta dezañ eva. Setu petra a reas an tri den kaloneg-se.
18. Abisai, breur Joab, mab Sarvia, a oa ar henta euz an tri. Eñ eo a zavas e hoaf ouz tri-hant, pere a lazas : eun ano kaer en-doa e-touez an tri ;
19. Hag ar brudeta a oa etre an tri, rag o friñs e oa : hogen ne dalve ket an tri henta.

³⁶⁹ eur park ledan a fer : eur parkad fer ledan.

³⁷⁰ an tregont : an tregont den a oa e penn an traou.

20. Banaias euz a Gabreel, mab Joiada, den kaloneg-braz, a reas ivez oberiou kaer : eñ eo a lazaz an daou leon euz a Voab ; hag eñ eo a ziskennas e amzer an erh en eur puñs seh, hag a lazaz eno eul leon.

21. Eñ eo ivez a lazaz eun Ejiptian, den iskiz da weloud, pehini en-doa eur goaf en e zorn : hogen eñ a ziskennas outañ gand eur wialenn, a ziframmas e hoaf euz a zorn an Ijiptian, hag a lazaz anezañ gand e hoaf e-unan.

22. Setu petra a reas Banaias, mab Joiada.

23. En ano kaer en-doa e-touez an tri, pere a oa ar re vrudeta euz an tregont : koulskoude ne dalvas ket an tri henta : ha David e lakaas e penn e warded.

24. Asael, breur Joab, a oa euz an tregont ; Elehanam ; man Dodo, euz a Vetlehem,

25. Semma euz a Harodi, Elika euz a Harodi,

26. Helez euz a Falti, Hira, mab Akkez, euz a Dekua,

27. Abiezer euz a Anatot, Mobonnai euz a Husati,

28. Selmon euz a Ahoh, Maharai euz a Nefotat,

29. Heled, mab Baana, a oa ivez euz a Netofat, Itai, mab Ribai, euz a Habaat da vibien Bernjamin,

30. Banaia euz a Faratou, Heddai euz a froud Gaas,

31. Abialbon euz a Arbat, Armavet euz a Veromi,

32. Eliaba euz a Salaboni ; euz a vibien Jassen, Jonatan,

33. Semma euz a Orori, Aiam, mab Sara, euz a Aror,

34. Elifelet, mab Aasbai, mab Manac'hti, Eliam, mab Ac'hitofel, euz a Helon,

35. Hesrai euz ar Harmel, Farai euz a Arbi,

36. Igaal, mab Natan, euz a Zoba, Bount euz a Hadi,

37. Selek euz a Ammoni, Nahari euz a Verot, floh Joab, mab Sarvia,

38. Ira euz a Jetri, Gareb a oa ivez euz a Jetri,

39. Urias an Helead : en oll seiz ha tregont.

XXIV. Pennad.

David a laka da niveri ar bobl. Doue a gas dezañ ar vosenn.

1. Ha buanegez an Aotrou a zavas adarre a-eneb Izrael ; hag eñ a alias David en o eneb, oh e lakaad da lavaroud : Kee, ha niver Izrael ha Juda.

2. Hag ar roue a lavaraz da Joab, priñs e arme : Bale dre oll vreuriezhou Izrael, adaleg Dan beteg Bersabea, ha niver ar bobl, evid ma anavezin an niver anezi.

3. Ha Joab a lavaraz d'ar roue : Ra gresko da bobl an Aotrou da Zoue, ra lakay anezi kant gwech kemend-all, dirag an aotrou, va roue, hogen petra a fell d'ar roue dre ze ?

4. Hogen lavar ar roue a oe treh da heriou Joab ha priñsed e arme : Joab eta a yeas kuit, gand priñsed e arme, euz a-zirag ar roue, evid niveri pobl Izrael.

5. Ha goude m'o-doe treuzet ar Jourdan, e teujont da Aroer, war an tu dehou euz ar gêr a zo e traonienn Gad.

6. Mond a rejont ahano euz a Jazer e Galaad, hag e bro izel Hodsi ; hag e teujont da goad Dan. Hag o trei war-dro da Zidon,

7. E tremenjont e-tal muriou Tir, hag oll vro an Heved hag ar Hananeed ; hag e teujont da Versabea, a zo war-zu ar hreisteiz euz a Juda.

8. Ha goude m'o-doe peurredet ar vro, e teujont da Jeruzalem, goude nao miz hag ugent devez.

9. Joab eta a roas d'ar roue an nivererez euz ar bobl : hag e oe kavet euz a Izrael, eiz-kant mil den kaloneg, hag a zouge ar hleze, hag euz a Juda, pemp-kant mil den a vrezel.

10. Hogen goude ma oe niveret ar bobl, e oe skoet e kalon David hag eñ a lavaras d'an Aotrou : Gwall behet em-eus e-kement-se : hogen da bedi a ran, Aotrou, ma tenni ar fallagriez diwar da zervijer, o veza ma em-eus he greet en eun doare diskiant-braz.

11. David eta a zavas dioh ar mintin, hag an Aotrou a gomzas ouz Gad ar profed ha Gweler³⁷¹ David, hag a lavaras :

12. Kee, ha lavar da Zavid : Setu petra a lavar an Aotrou : ar hemm³⁷² a roan dit euz a dri dra : dilenn an hini a fell dit a rin dit.

13. Ha Gad o veza deuet etrezeg David, a lavaras kement-mañ dezañ : Pe e teuy naonegez en da vro e-pad seiz vloaz ; pe e tehi dirag da enebourien, hag i war da lerh e-pad tri miz ; pe e vezo ar vosenn en da vro e-pad tri devez. En em guzul eta bremañ, ha gwel petra a livirin d'an hini en-deus va haset.

14. Hogen David a lavaras da Had : Enkrezet-braz on ; hogen gwell eo ganen koueza etre daouarn an Aotrou (rag kalz a drugarez en-deus), eged koueza etre daouarn an dud.

15. An Aotrou a gasas eta ar vosenn e Izrael, adaleg ar mintin beteg an amzer merket : hag e varvas eus ar bobl, adaleg Dan beteg Bersabea, deg mil den ha tri-ugent mil³⁷³.

16. Ha pa astenne êl an Aotrou e zorn war Jeruzalem, evid he gwasta, an Aotrou en-doe truez ouz kement-se a zroug, hag a lavaras d'an êl a skoe war ar bobl : A-walh eo ; dalh bremañ da zorn ; hogen an êl a oa deuet beteg leur Areuna, ar Jebusead.

17. Ha David a lavaras d'an Aotrou, pa welas an êl o skei war ar bobl : Me eo em-eus pehet ; me eo em-eus greet an droug : hogen ar re-ze pere n'int nemed deñved, petra o-deus-i greet ? Ra droy, me az ped, da zorn ouzin, hag ouz ti va zad.

18. Hogen Gad a zeuas en deiz-se da gavoud David, hag a lavaras dezañ : Pign, ha sav eun aoter d'an Aotrou e leur Areuna, ar Jebusead.

19. Ha David a bignas, hervez ger Gad ha gourhemenn an Aotrou.

20. Hag Areuna o selloud, a welas ar roue hag e zervijerien a zeue etrezeg ennañ.

21. Hag o veza eet er-mêz, en em strinkas war e henou dirag ar roue, hag e lavaras dezañ : Perag e teu an aotrou, va roue, da gavoud e zervijer ? Ha David a lavaras dezañ : Evid prena diganez da leur, ha sevel eun aoter d'an Aotrou, evid ma ehano al lazerez a gouez war ar bobl.

22. Hag Areuna a lavaras da Zavid : Kemeret ha kinniget an aotrou, va roue, ar pez a gavo mad. Setu ejenned evid ar sakrifis-losk, hag eur harr, ha geviou ejenned³⁷⁴ e-leh keuneud.

23. Ar roue Areuna a roas kement-se d'ar roue. Hag Areuna a lavaras d'ar roue : Ra zegemero an Aotrou, da Zoue, da ouestl.

24. Hag ar roue a lavaras dezañ : Ne rin ket ar pez a fell dit ; hogen an dra-ze a brenin diganez ; ha ne ginnigin ket e sakrifis-losk d'an Aotrou, va Doue, ar pez n'en-devezo koustet netra din. David a brenas eta al leur, hag an ejenned evid hanter-kant sikl arhant :

25. Ha David a zavas eun aoter d'an Aotrou, hag a ginnigas sakrifisou-losk ha sakrifisou a beoh. Hag an Aotrou en em unvanas gand ar vro, hag ar gouli a ehanas e Izrael.

³⁷¹ Gweler : lenner pladennou.

³⁷² ar hemm : da choaz.

³⁷³ deg mil den ha tri-ugent mil : 70.000.

³⁷⁴ geviou ejenned : ?

1.

TREDE LEVR AR ROUEED

Hervez an Hebreed,

Ar henta euz a Valakim

I.Pennad.

Adonias a zispah evid beza lakaet da roue. Salomon eo a zo dilennet.

1. Hag ar roue David a oa deuet da veza koz ; hag eñ a oa hir-hoalet : ha kaer o-doa e holei gand dillad, ne helled ket e domma.
2. E zervijerien eta a lavaras dezañ: Ni a glasko evid an aotrou, or roue, eur plah yaouank gwerh ; hag hi a chomo dirag ar roue, hag a brederio anezañ : hag hi a gousko en e askre, hag a dommo d'an aotrou or roue.
3. Hag i a glaskas eta eur plah-yaouank kaer e oll vro Izrael ; hag e kavjont Abisag euz a Zunam ; hag e tegasjont anezi d'ar roue.
4. Hogen hi a oa eur plah-yaouank kaer-meurbed ; hag hi a gouske gand ar roue, hag a zervije anezañ : hogen ar roue ne anavezaz ket anezi.
5. Koulskoude Adonias, mab Haggit, a zave, o lavaroud : Me eo a reno. Hag eñ a lakaas d'aober kirri evitañ, hag a gemeras marheien, hag hanter-kant den evid redeg en e raog.
6. Ha biskoaz e dad ne grozas anezañ, ha ne lavaras dezañ: Perag eh-eus-te greet evel-se ? Hogen hemañ a oa ivez kaer-meurbed, hag an eil ganet ganet Absalom.
7. Hag unvan e oa gand Joab, mab Sarvia, ha gand Abiatar ar beleg, pere a gennerze ar re a oa en tu gand Adonias.
8. Hogen Sadok, ar Beleg-braz, ha Banaias, mab Joiada, ha Natan ar profed, ha Semei ha Rei, ha nerz arme David, ne oant ket evid Adonias.
9. Adonias o veza lazet tourhed, ha leueou, hag a bep seurt loen lard, e-tal M'n Zohélet pehini a oa tost da feunteun Rogel, a halvas e oll vreudeur, mibien ar roue, hag oll dud Juda, servijerien ar roue.
10. Hogen ne halvas ket Natan ar profed, na Banaias, nag ar re galoneka euz an arme, na Salomon e vreur.
11. Natan eta a lavaras da Vetsabee, mamm Salomon : Ha n'eh-eus-te ket klevet penoaz Adonias, mab Haggit, a zo en em lakaet da roue, heb gouzoud da Zavid, on aotrou ?
12. Deus eta bremañ, kemer kuzul diganen, ha savete da vuhez, hag hini Salomon da vab.
13. Kerz, ha kee da gavoud ar roue David, ha lavar dezañ: Ha n'eh-eus ket touet din, me da vatez, aotrou va roue, o lavaroud : Salomon da vab a reno war va lerh, hag eñ eo a azezo war va zron ? Perag eta e ren Adonias ?
14. Ha pa vezi c'hoaz o komza gand ar roue, me a zeuy war da lerh, hag a gretay da lavar.
15. Betsabee a yeas eta da gavoud ar roue en e gamp : hogen ar roue a oa

gwall-goz, hag Abisag euz a Zunam a zervije anezañ.

16. Betsabee a stouas, hag en em strinkas da dreid ar roue. Hag ar roue a lavaras dezi : Petra a fell dit ?

17. Hag hi a lavaras dezañ: Va aotrou, te eh-eus touet dre an Aotrou da Zoue d'az matez : Salomon da vab a reno war va lerh, rag eñ eo a azezo war va zron.

18. Ha setu bremañ e ren Adonias, heb gouzoud dit, aotrou va roue.

19. Lazet en-deus ejenned, hag a beb loen lard, ha kalz tourhed ; hag eñ en-deus galvet oll vibien ar roue, hag ivez Abiatar, ar beleg, ha Joab, priñs an arme : hogen n'en-deus ket galvet Salomon da zervijer.

20. Koulskoude, aotrou va roue, oll Izrael en-deus e zaoulagad warnout, evid ma roy da anaoud dezo, piou a dle azeza war da dron, aotrou va roue, war da lerh.

21. Rag pa vezo kousket an aotrou va roue gand e dadou, e vezim lakaet, me ha da vab Salomon, evel gwallerien.

22. Ha pa gomze hi ouz ar roue, e teuas Natan ar profed.

23. Hag e oe lavaret d'ar roue : Setu Natan ar profed. Ha pa oe kaset dirag ar roue, ha pa oe-eñ en em strinket d'an douar,

24. E lavaras Natan : Aotrou va roue, ha lavaret eh-eus-te : Adonias a reno war va lerh, hag eñ a azezo war va zron ?

25. Rag diskennet eo hirio, ha lazet eo bet gantañ ejenned, ha loened lard, ha kalz tourhed ; hag eñ en-deus galvet oll vibien ar roue, ha priñsed an arme, hag Abiatar ar beleg : hag i a zebr hag a ev gantañ, hag a lavar : Bezet beo ar roue Adonias.

26. Hogen n'en-deus galvet na me, da zervijer, na Sadok, ar Beleg-braz, na Banaias, mab Joiada, na Salomon, da zervijer.

27. Ha diouz an aotrou, va roue, eo deuet an urz-se, heb beza roet da anaoud din piou a dlee azeza war dron an aotrou, va roue, war e lerh ?

28. Hag ar roue David a respontas hag a lavaras : Galvit Betsabee d'am havoud. Ha pa oe deuet hi da gavoud ar roue, ha ma chome en he sav dirazañ,

29. E touas ar roue, hag e lavaras : Evel ma eo beo an Aotrou, pehini en-deus tennet va ene euz a beb droug,

30. Evel ma em-eus touet dit dre an Aotrou, Doue Izrael, o lavaroud : Salomon va mab a reno war va lerh ; evel-se e rin hirio.

31. Neuze Betsabee oh en em strinka war he genou d'an douar, a azeulas ar roue, hag a lavaras : Bezet beo da viken David, va aotrou.

32. Ar roue David a lavaras c'hoaz : Galvit d'am havoud Sadok, ar Beleg-braz, ha Natan ar profed, ha Banaias, mab Joiada. Ha pa oent deuet dirag ar roue,

33. E lavaras-eñ dezo : Kemerit ganeoh servijerien hoh aotrou, ha likiit Salomon, va mab, war va mulez ha kasit eñ da Gihon.

34. Ha ra vezo eouliet eno gand Sadok ar Beleg-braz, ha gand Natan ar profed, da roue war Izrael ; ha C'hwi a embanno gand ar horn-boud, hag a lavaro : Bezet beo ar roue Salomon.

35. C'hwi a bigno war e lerh : hag eñ a zeuy, hag a azezo war va zron, hag a reno evidon : ha me a hourhemmenno dezañ da veza da benn war Izrael ha war Juda.

36. Ha Banaias, mab Joiada, a lavaras d'ar roue : Amen ! : ra vezo greet, hervez ma lavar an Aotrou, Doue va roue.

37. Evel ma eo bet an Aotrou gand an aotrou va roue, ra vezo evel-se gand Salomon ; ha ra zavo mui e dron, eged ne deo bet savet hini an aotrou David, va roue.

38. Sadok eta ar Beleg-braz, ha Natan ar profed, ha Banaias, mab Joiada, hag

ar Seretied, hag ar Feletied, a ziskennas ; hag i a lakaas Salomon da bigna war vulez ar roue David, hag a gasas anezañ da Hibon.

39. Ha Sadok ar Beleg-braz a gemeras eur hornad eoul euz an tabernakl, hag a eoulias Salomon. Hag i a zonas gand ar horn-boud, hag an oll bobl a lavaras : Bezet beo roue Salomon.

40. Hag an oll bobl a bignas war e lerh, ha kalz anezo a hoarie gand sutellou, hag en em laouennae kaer : hag an douar a zassone gand o cholori.

41. Hogen Adonias, hag ar re oll a oa bet pedet gantañ, a glevas, pa oa echu ar banvez : ha Joab o veza klevet son ar horn-boud, a lavaras : Petra eo an trouz hag an dispah a zo e kêr ?

42. Ha pa gomze c'hoaz, Jonatas, mab Abiatar, ar beleg a zeuas ; hag Adonias a lavaras dezañ: Deus e-barz, rag eun den kaloneg out, hag e tegasez kelou mad.

43. Ha Jonatas a lavaras da Adonias : E neb doare, rag ar roue David on aotrou en-deus lakaet Salomon da roue :

44. Hag eñ en-deus kaset gantañ Sadok ar Beleg-braz, ha Natan ar profed, ha Banaias, mab Joiada, hag ar Seretied, hag ar Feletied : hag i o-deus e lakaet war mulez ar roue.

45. Ha Sadok ar Beleg-braz, ha Natan ar profed o-deus e eouliet da roue e Gihon : hag ahano int pignet oh en em laouennaad dre ar gêr oll ; hennez eo an trouz hoh-eus klevet.

46. Salomon zoken a zo azezet war tron ar rouantelez.

47. Ha servijerien ar roue a zo deuet, hag o-deus benniget ar roue David on aotrou, o lavaroud : Ra lakay Doue ano Salomon dreist da ano, ha ra zavo e dron uheloh eged da dron. Hag ar roue a azeulas war e wele,

48. Hag a lavaras : Benniget ra vezo an Aotrou, Doue Izrael, pehini en-deus roet hirio din unan evid azeza war va zron, ha me c'hoaz oh e weloud.

49. Ar re oll eta pere a oa bet pedet gand Adonias a oe spontet, hag a zavas : hag i a yeas pep hini en e hent.

50. Hogen Adonias, pehini en-doa aon rag Salomon, a zavas, hag a yeas kui, hag a grogas e korn an aoter.

51. Ha lavaret e oe da Salomon : Setu Adonias, pehini gand an aon en-deus rag ar roue Salomon, a zo harpet e korn an aoter, hag a lavar : Ra douo din hirio ar roue Salomon, penaoz ne lazo ket e zervijer gand ar hleze.

52. Ha Salomon a lavaras : Mar deo bet eun den mad, ne gouezo ket d'an douar eur vlevenn hepken euz e benn : hogen mar bez kavet droug ennañ, e varvo.

53. Ar roue Salomon a gasas eta, evid tenna Adonias diogh an aoter. Hag eñ a zeuas, hag a azeulas ar roue Salomon. Ha Salomon a lavaras dezañ: Kee d'az ti.

II .Pennad.

Aliou diweza David da Zalomon. Adonias ha Joab a zo lazet.

1.Hogen deiz maro David a dostae, hag eñ a roas an aliou-mañ da Zalomon e vab ; o lavaroud :

2. Mond a ran en hent e pehini e tle mond an oll dud : en em nerza, ha bez eun den.

3. Gra gourhemennou an Aotroun da Zoue, ha kerz en e heñchou ; ha mir e lidou, hag e gelennou, hag e varnedigeziou, hag e desteniou, evel ma eo skrivet e

lezenn Moizez, evid ma ouezi petra eh-eus da ober, ha war pe du e tleez trei ;

4. Evid ma seveno an Aotrou ar ger en-deus roet din, o lavaroud : Ma vir da vibien o heñchou, ha mar kerzont dirazon er wirionez, a-greiz o halon hag a-greiz o ene, ne vezo tennet hini anezo diwar dron Izrael.

5. Te a oar ivez petra en-deus greet din Joab, mab Sarvia, petra en-deus greet da zaou euz a briñsed arme Izrael, Abner, mab Ner, hag Amasa, mab Jeter, pere en-deus lazet, o skuilla gand ar brezel ar peoh, hag en-deus lakaet gwad an emgann war e houriz a oa en e zargreiz, ha war e voutou a oa en e dreid.

6. Ober a ri eta hervez da furnez, ha ne lezi ket e vleo gwenn da ziskenni er bez e peoh.

7. Hogen anaoudeg e vezi e-keñver mibien Berzellai euz a Halaad, hag i a zebro oh da daol : rag i a zo deuet d'am diambroug pa dehen a-zirag Absalom da vreur.

8. Bez' eh-eus ivez ganez Semei, mab Gera, mab Jemini, euz a Vahurim, pehini en-deus gwallvilliget ahanon, pa'z een d'ar hamp : hogen o veza ma eo bet diskennet d'am diambrouga pa dreuzen ar Jourdan, me a douas dezañ dre an Aotrou, o lavaroud : N'az lazin ket gand ar hleze.

9. Hogen na houzañv ket e chomfe digastiz. Eun den fur out, ha te a oar petra a dleez da ober dezañ, ha mar deo red lakaad e vleo gwenn da ziskenni er bez gand gwad.

10. David eta a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet e kêr David.

11. Hogen an deziou ma renas David war Izrael a oe euz a zaou-ugent vloaz : seiz vloaz e renas e Hebron, ha tri ha tregont e Jeruzalem.

12. Hogen Salomon a azezas war tron David e dad, hag e ren en em stardas kreñv.

13. Neuze Adonias, mab Haggit, a yeas da gavoud Betsabee, mamm Salomon. Hag houmañ a lavaras dezañ: Ha gand peoh e teuez amañ ? Hag eñ a lavaras : Gand peoh.

14. Hag eñ a lavaras : Eur ger em-eus da lavaroud dit. Hag hi a lavaras : Komz.

15. Te a oar, emezañ, penaoz e oa din ar rouantelez, ha penaoz en-doa oll Izrael va dilennet da roue : hogen dizouget eo ar rouantelez, ha tremenet eo d'am breur ; rag an Aotrou en-deus he roet dezañ.

16. Bremañ eta e houlennan eun dra diganez : n'e zinah ket din em mez. Hag hi a lavaras dezañ: Komz.

17. Hag eñ a lavaras : Me az ped da lavaroud d'ar roue Salomon (rag ne hell dinaha netra dit), da rei din da wreg Abisag, euz a Zunam.

18. Ha Betsabee a lavaras : Mad ; me a gomzo d'ar roue evidout.

19. Bersabee a zeuas eta da gavoud ar roue Salomon, evid komza outañ diwar-benn Adonias. Hag ar roue a zavas, a yeas war heh arbenn, a azeulas, hag a azezas war e dron : ha lakaet e oe eun tron evid mamm ar roue pehini a azezas a-zehou dezañ.

20. Hag hi a lavaras dezañ: Eur goulenn bihan em-eus da ober dit : n'e zinah ket din. Hag ar roue a lavaras dezi : Goulenn, va mamm : rag ne ve ket deread e tinahfen ahanout.

21. Hag hi a lavaras : Ro Abisag euz a Zunam da wreg da Adonias, da vreur.

22. Hag ar roue Salomon a respontas, hag a lavaras d'e vamm : Perag e houlenez-te Abisag euz Zunam evid Adonias ? Goulenn ivez ar rouantelez evitañ ; rag va breur hena eo, hag evitañ en-deus Abiatar, ar beleg, ha Joab, mab Sarvia.

23. Ar roue Salomon a douas eta dre an Aotrou, o lavaroud : Ra ray Doue kement-se din, hag ohpenn, ma n'en-deus Adonias lavaret kement-se a-eneb e vuhez.

24. Ha bremañ, evel ma eo beo an Aotrou, pehini en-deus va stardaet, ha va lakaet war dron David, va zad, hag en-deus greet din eun ti, evel m'en-doa lavaret, e vezo laz et hirio Adonias.

25. Hag ar roue Salomon a gasas Banaïas, mab Joïada, pehini a skoas gantañ, hag e laz as.

26. Hag ar roue a lavar as da Abiatar ar beleg : Kee da Anatot, en douar a zo dit : te a dlefe mervel ; hogen n'az laz in ket hirio, o veza ma eh-eus douget arh an Aotrou Doue dirag David va zad, ha ma eh-eus skoaziet va zad en e oll labouriou.

27. Salomon eta a gasas kuit Abiatar, evid na vije mui beleg d'an Aotrou ; evid ma vije sevenet ger an Aotrou en-doa lavaret e Silo diwar-benn ti Heli.

28. Hogen ar helou-ze o veza deuet da Joab, pehini a oa eet a-du gand Adonias, ha n'en-doa ket heuliet Salomon ; e tehas Joab da dabernakl an Aotrou, hag e krogas e korn an aoter.

29. Ha roet e oe da anaoud d'ar roue Salomon penaoz e oe tehet Joab etrezeg tabernakl an Aotrou, ha ma oa e-tal an aoter. Ha Salomon a gasas Banaïas, mab Joïada, o lavaroud : Kee, ha laz eñ.

30. Ha Banaïas a yeas e tabernakl an Aotrou, hag a lavar as da Joab : Setu petra a lavar dit ar roue : Kee er-mêz. Hag eñ a lavar as : N'ez in ket er-mêz ; hogen amañ e varvin. Banaïas a zanevellas kement-se d'ar roue, o lavaroud : Setu petra en-deus lavaret ha respontet Joab din.

31. Hag ar roue a lavar as dezañ : Gra evel m'en-deus lavaret. Laz eñ, hag e laka er bez, hag e tenni diwarnon ha diwar ti va zad ar gwad dinamm a zo bet skuillet gand Joab.

32. Hag an Aotrou a zistaolo e wad war e benn e-unan, o veza ma en-deus laz et daou zen gwirion ha gwelloh egetañ ; ha ma en-deus laz et gand ar hleze, heb gouzoud da Zavid va zad, Abner, mab Ner, priñs arme Izrael, hag Amasa, mab Jeter, priñs arme Juda.

33. Hag o gwad a zistroio war penn Joab, ha war penn e ouenn da viken. Hogen ra roy an Aotrou eur peoh peurbaduz da Zavid ha d'e ouenn, d'e di ha d'e dron.

34. Banaïas, mab Joïada, a bignas eta, en em daolas warnezañ hag e laz as : hag eñ a oe beziet en e di e-unan en distro.

35. Hag ar roue a lakaas Banaïas, mab Joïada, en e leh e penn an arme, ha Sadok ad Veleg-braz e-leh Abiatar.

36. Ar roue a gasas ivez da hervel Semeï, hag a lavar as dezañ : Sao dit eun ti e Jeruzalem, ha chom eno ; ha n'ez a er-mêz na tu-mañ na tu-hont.

37. Rag e pe zeiz bennag ez i er-mêz, hag e treuzi froud Sedron, gouez penaoz e vezi laz et : ha da wad a gouezo war da benn da-unan.

38. Ha Semeï a lavar as d'ar roue : Mad eo ar ger : evel m'en-deus lavaret an aotrou va roue, e vezo greet gand e zervijer. Ha Semeï a chomas pell e Jeruzalem.

39. Hogen da benn tri bloaz e c'hoarvezas penaoz sklaved Semeï a dehas etrezeg Akis, mab Maac'ha, roue Get : ha roet e oe da anaoud da Zemeï penaoz e oa eet e sklaved da Het.

40. Ha Semeï a zavas, hag a zibras e azen : hag eñ a yeas da gavoud Akis e Get evid goulenni e sklaved, hag a zegasas anezo euz a Het.

41. Hogen roet e oe da anaoud da Zalomon penaoz e oa bet eet Semeï euz a

Jeruzalem da Het, hag e oa distro.

42. Hag eñ a gasas d'e hervel, hag a lavaras dezañ : Ha n'em-eus ket touet dit dre an Aotrou, o lavaroud : E pe zeiz bennag ma'z i er-mêz tu-mañ ha tu-hont, gouez penaoz e vezi lakaet d'ar maro ? Ha te eh-eus laavret din : Mad eo ar ger em-eus klevet.

43. Perag eta n'eh-eus-te ket miret le an Aotrou, hag ar gourhemenn em-boaroet dit ?

44. Hag ar roue a lavaras da Zemei : Te a oar an oll zroug a damall da galon dit, hag eh-eus greet a-eneb David va zad : an Aotrou en-deus distaolet da zrougiez war da benn da-unan.

45. Hag ar roue Salomon a vezo benniget, ha tron David a vezo stard dirag an Aotrou da viken.

46. Ar roue eta a roas e hourhemenn da Vanaias, mab Joiada ; hag hemañ a yeas er-mêz, a skoas gand Semei hag a lazas anezañ.

III. Pennad.

Salomon a houlenn ar furnez digand Doue. E varn etre diou wreg.

1. Stardet e oe eta ar rouantelez e dorn Salomon : hag eñ en em unanas e kevredigez gand

Faraon, roue an Ejipt ; rag eñ a gemeras e verh da wreg, hag a zegasas anezi da gêr David, ken na oa peursavet gantañ e di e-unan, ha ti an Aotrou, ha mur Jeruzalem tro-war-dro.

2. Koulskoude ar bobl a ree he safrifisou war al lehiou uhel ; rag ne oa ket bet savet c'hoaz beteg neuze a dempl e ano an Aotrou.

3. Hogen Salomon a garas an Aotrou, o kerzoud e kemennou David e dad¹, nemed ma reas sakrifisou, ha ma tevas louzou c'hwez-vad war al lehiou uhel.

4. Mond a reas eta da Habaon evid ober eur sakrifis eno : rag ar brasa e oa euz al lehiou uhel : ha Salomon a ginnigas mil ostiv e sakrifis war an aoter-ze e Gabaon.

5. Hogen an Aotrou en em ziskouezas da Zalomon en eun huñvre e-pad an noz, hag a lavaras : Goulenn ar pezh a fell dit e rojen dit.

6. Ha Salomon a lavaras : Te eh-eus greet eun drugarez vraz e-keñver da zervijer David va zad, hervez ma en-deus kerzet dirazout er wirionez, hag er reizded, hag en eeunder a galon ganez : miret eh-eus dezañ an drugarez vraz-se, hag eh-eus roet dezañ eur mab a zo azezet war e dron, evel ma eo hirio.

7. Ha bremañ, Aotrou Doue, te eh-eus lakaet da zervijer da rena e-leh va zad : hogen me a zo eur bugel bihan, ha ne ouezan na mond na dond.

8. Ha da zervijer a zo e-kreiz ar bobl eh-eus dilennet, eur bobl diniver, pehini ne heller ket da niveri dre an abeg ma'z eo stank-meurbed.

9. Ro eta d'az servijer eur galon doujuz, evid ma hello barna da bobl, ha dibaba ar mad diou an droug : rag piou a hello barna ar bobl-se, da bobl, ker braz eo ?

10. An Aotrou a gavas mad eta en-divije Salomon greet ar goulenn-ze outañ.

¹ o kerzoud e kemennou David e dad : oh heulia kemennou e dad.

11. Hag an Aotrou a lavaras da Zalomon : O veza ma eh-eus greet ar goulenn-ze ouzin, ha n'eh-eus ket goulennet evidout kalz deiziou, na kalz madou, na buhez da enebourien ; hogen ma eh-eus goulennet evidout ar furnez evid anaoud ar varn :

12. Setu em-eus greet hervez da hoant, hag em-eus roet dit eur galon ker fur ha ker poelleg, n'eo ket² en em gavet hini heñvel ouzit en da raog, ha ne zavo war da lerh.

13. Hogen roet em-eus dit ar pezh n'eh-eus ket goulennet ; da lavaroud eo ar madou hag ar hloar, en heveleb doare ne vezo bet roue ebed heñvel ouzit en oll zeiziou.

14. Hogen ma kerzez em heñchou, ha ma virez va helennou ha va gourhemennou, evel ma en-deus o miret da dad, eh astennin da zeiziou.

15. Salomon a zihunas hag a brederias piz war an huñvre en-doa bet : ha pa oe deuet da Jeruzalem, e savas dirag arh kevredigez an Aotrou, hag a ginnigas sakrifisou-losk, ha viktimou a beoh ; hag eñ a reas eur banvez braz d'e oll zervijerien.

16. Neuze e teuas diou hast da gavoud ar roue, ha chom a rejont dirazañ.

17. Hag unan anezo a lavaras : Me az ped, va aotrou : ar vaouez-se ha me a chome en heveleb ti ; ha me a zo gwilioudet er gambr e pehini edo.

18. Tri deiz goude ma on bet gwilioudet, eo bet gwilioudet houmañ : ha ni a oa kevred, ha den all ebed ne oa ganeom, nemedom on-diou.

19. Hogen mab ar vaouez-se a zo maro en noz-mañ ; rag hi he-deus e vouget dre he housk.

20. Hag hi o sevel e-pad an noz, a gemeras va mab euz va hichenn, me da zervijer, e-pad ma oan kousket, hag e lakaas anezañ en he hichenn : hag e lakaas em hichenn he mab pehini a oa maro.

21. Ha pa zavis diouh ar mintin evid rei da zena d'am mab, e welis anezañ evel ma vije maro : hogen o selloud piz outañ pa oe sklêr an deiz, e welis ervad penaoz ne oa ket hennez em-boa ganet.

22. Hag ar vaouez all a lavaras : N'eo ket evel ma levez : Rag da vab-te eo a zo maro, ha va hini eo a zo beo. Hag houmañ en eneb a lavare : Gaou a levez ; rag va mab eo a zo beo, ha da vab eo a zo maro, hag evel-se e strivent dirag ar roue.

23. Neuze ar roue a lavaras : Houmañ a lavar : Va mab a zo beo, ha da vab a zo maro. Hag hounnez a lavar : Nann ; hogen da vab eo a zo maro, ha va hini a zo beo.

24. Hag ar roue a lavaras : Degasit din eur hleze. Ha pa oe degaset eur hleze dirag ar roue ;

25. Rannit, emezañ, war zaou-hanter ar bugel beo, ha roit an hanter da unan, hag an hanter d'eben.

26. Hogen ar vaouez a oa beo he mab, a lavaras d'ar roue (rag he halon a lamme evid he mab) ; ro dezi, aotrou, me az ped, ar bugel beo, ha na laz ket anezañ. Hag an hini all en eneb a lavare : Ne vezet na din na dit ; hogen ra vezo rannet.

27. Neuze ar roue respontas hag a lavaras : Roit da hounnez ar bugel beo, ha na vezet ket lazet ; rag e vamm eo.

28. Izrael oll eta o veza klevet ar varn en-doa roet ar roue, a zoujas anezañ, o weloud penaoz edo furnez Doue ennañ evid ober barn.

² n'eo ket : n'eus ket.

IV. Pennad.

Ofiserien Salomon. Furnez Salomon.

1. Hogen ar roue Salomon a rene Izrael oll ;
2. Ha setu ar briñsed, pe an ofiserien en-doa : Azarias, mab Sadok, ar Belegbraz ;
3. Elihoref hag Ahia, mibien Sisa, a oa skrivagnerien³ : Josafat a oa sieller⁴.
4. Banaias, mab Joiada, a oa e penn an arme : ha Sadok hag Abiatar a oa beleien.
5. Azrias, mab Natan, a oa da benn ar re a oa war-dro d'ar roue ; Zabud, beleg, mab Natan, a oa mignon d'ar roue.
6. Ahisar a oa merer an ti ; hag Adoniram, mab Abda, war an tellou⁵.
7. Hogen Salomon en-doa lakaet daouzeg den war Izrael oll, pere o-doa ar preder euz a daol ar roue ha tud e di : rag pep hini anezo a roe kement a oa red beb miz.
8. Ha setu o anoioù : Benhur war menez Efraim.˘
9. Ha Bendekar e Makkez, hag e Salebim, hag e Betsamez, hag e Elon, hag e Betanan.
10. Ha Benhesed e Arubot : eñ en-doa ivez Soko hag oll zouar Efer.
11. Ha Benabinadab e oll vro Nefatdor, pehini a zimezas gand Tafet, merh Salomon.
12. Bana, mab Ahilud, a sturie e Tanak hag e Mageddo, hag e Betsan oll, a zo tost da Zartana, izelloh eged Jezrael, adaleg Betsan beteg Abelmehula, rag eneb da Jekmaan.
13. Bengaber e Ramot-Galaad : eñ en-doa bourhiou Jair, mab Manase e Galaad : eñ a hourhemenne e oll vro Argob, a zo e Basan, war tri-ugent kêr vraz muriet, pere o-doa potajou⁶ arem.
14. Abinadab, mab Addo, a hourhemenne e Manaim.
15. Ac'himaas e Neftali ; hag eñ ivez a oa dimezet gand Basemat, merh Salomon.
16. Baana, mab Husi, e Aser hag e Balot.
17. Josafat, mab Farue, e Isakar.
18. Semei, mab Ela, e Benjamin.
19. Gabezr, mab Uri, e bro Galaad, e bro Schon, roue an Amorreed, hag Og, roue Bazan, war gement a oa er vro-ze.
20. Juda hag Izrael a oa diniver, evel trêz ar mor ; hag i a zebre hag a eve en eul levenez vraz.
21. Hogen Salomon en-doa dindan e halloud an oll rouanteleziou adaleg ar ster beteg bro ar Filistined, ha beteg harzou an Ejipt : hag i a ginnige dezañ rouo, hag a chomas dindan e veli e-pad an oll zeizioù e vuhez⁷.

³ skrivagnerien : sekretourien.

⁴ sieller : diellour.

⁵ tellou : an taillou.

⁶ potajou : barrennou.

⁷ an oll zeizioù e vuhez : oll zeizioù e vuhez.

22. Boued Salomon a oa bemdez euz a dregont korus⁸ bleun-gwiniz, ha tri-ugent korus bleud ;

23. Deg ejenn lard, hag ugent ejenn ouz ar peuri, ha kant tourh, heb niveri ar hig hemolh, ar hirvi, ar youarhed, ar bualed, hag an evned lardet.

24. Rag mestr e oa war an oll vro a oa en tu all d'ar ster, adaleg Tafsa beteg Gazan, hag oll roueed ar broiou-ze : hag eñ en-doa ar peoh e pep tu tro-war-dro.

25. Juda hag Izrael a chomas eta heb aon ebed, pep hini dindan, e winienn, ha dindan e fiezenn, adaleg Dan beteg Betsabee, e oll zeiziou Salomon.

26. Ha Salomon en-doa en e varchosiou daou-ugent mil marh evid ar hirri, ha daouzeg mil evid ar varheien.

27. Hag an ofiserien euz ar roue, a bere on-eus komzet, a vage anezo : hag i a lakae en e amzer⁹ gand kalz a breder war daol ar roue Salomon, kement a oa red dezañ.

28. I a gase ivez heiz ha kolo evid ar hezeg hag al loened all el leh ma oa ar roue, hervez an urz a oa bet roet dezo.

29. Doue a roas ivez da Zalomon eur furnez hag eur poell braz-meurbed, hag eun ehonder a galon heñvel ouz trêz ar mor.

30. Ha furnez Salomon a oa dreist furnez oll re ar sav-heol hag an oll Ejiptianed.

31. Hag eñ a oa furroh eged an oll dud ; furroh eged Etan, an Ezrahit, eged Heman, ha Kalkul, ha Dorda, mibien Mahol ; hag eñ a oa brudet-braz e-touez an oll vroadou tro-war-dro.

32. Salomon a lavaras ivez tri mil parabolenn : hag eñ a reas mil kanaouenn ha pemp.

33. Hag eñ a skrivas ivez diwar-benn ar gwez, adaleg ar sedr a zo war al Liban, beteg ar sikadez¹⁰ a zeu er-mêz euz ar voger : hag eñ en-deus skrivet ivez diwar-benn al loened, hag an evned, hag an naered, hag ar pesked.

34. Dond a ree tud euz an oll vroiou evid selaoui furnez Salomon, hag a-berz an oll roueed euz an douar evid klevoud e furnez.

V. Pennad.

Hiram, roue Tir, a ro da Zalomon ar hoad a zo red evid sevel an templ.

1. Hiram, roue Tir, a gasas ivez e zervijerien etrezeg Salomon : rag klevet en-doa penaoz e oa bet eouliet da roue e-leh e dad ; rag Hiram a oa bet bepred mignon da Zavid.

2. Hogen Salomon a gasas etrezeg Hiram, o lavaroud :

3. Te a oar Petra e oa youl David, va zad, ha penaoz n'en-deus ket gellet sevel eun ti e ano an Aotrou e Zoue, en abeg d'ar brezeliou e hourdrouze anezañ tro-war-dro, ken n'en-divije an Aotrou lakaet e enebourien dindan roudou e dreid.

4. Hogen bremañ an Aotrou, va Doue, en-deus roet din eun ehan tro-war-dro : ha n'em-eus nag enebour, nag enebiez.

⁸ korus : eur vuzul (?)

⁹ en e amzer : e-pad an amzer (eur mizvez) ma oa red dezañ labourad.

¹⁰ sikadez : eur blantenn.

5. Rag se e fell din sevel eun ti e ano an Aotrou, va Doue, evel ma en-deus komzet an Aotrou ouz David, va zad, o lavaroud : Da vab pehini a likiin en da leh war da dron, hennez eo a zavo eun ti em ano.

6. Gourhemenn eta d'az servijerien troha evidon gwez sedr euz al Liban ; ha va zervijerien a vezo gand da re : ha me a roy d'az servijerien ar govr a houlenni : rag te a oar penaoz n'eus den e-touez va fobl a oufe troha ar hoad evel ar Sidonied.

7. Ha pa glevas Hiram geriou Salomon, en em laouennaas meurbed hag e lavaras : Benniget ra vezo hirio an Aotrou Doue, pehini en-deus roet da Zavid eur mab fur-braz war ar bobl paot-mañ.

8. Hag Hiram a gasas etrezeg Salomon, o lavaroud : Klevet em-eus ar pezh eus kemennet din : me a ray kement a fell dit diwar-benn ar hoad sedr hag ar hoad sapr.

9. Va zervijerien a zegaso anezo euz al Liban d'ar mor : ha me o lakay war radellou war ar mor, beteg al leh az-pezo merket din ; ha me o diskargo eno ; ha te o hemero : ha te a roy din ar pezh a vezo red evid boueta va zi.

10. Hiram eta e roe da Zalomon koad sedr ha koad sapr, kement ha m'en-doa c'hoant da gaoud.

11. Hogen Salomon a roe da Hiram ugent mil kor¹¹ gwiniz, evid boueta e di, hag ugent kor eoul pur-braz : kement-se a roe Salomon da Hiram beb bloaz.

12. An Aotrou a roas ivez ar furnez da Zalomon, evel m'en-doa e lavaret dezañ. Ha peoh a oa etre Hiram ha Salomon, hag i a reas kevredigez o-daou.

13. Ar roue Salomon a zilennas micherourien e Izrael oll, hag an niver anezo a oa euz a dregont mil den.

14. Hag eñ o hase d'al Liban peb eil tro, deg mil beb miz ; en heveleb doare ma choment daou viz en o ziez : hag Adoniram a oa da vestr ar an oll dud-se.

15. Ha Salomon en-doa deg mil den ha tri-ugent, pere a zouge behiou, ha pevar-ugent mil, pere a vene mein war ar menez :

16. Heb niveri ar re a oa da vistri war beb labour, en niver a dri mil ha tri-hant, pere a hourhemenne d'ar re a ree al labour.

17. Hag ar roue a hourhemennas dezañ ma kemerjent mein braz, mein talvouduz-braz, evid diazez an templ, hag evid o bena.

18. Ha mañsonourien Salomon, ha mañsanourien Hiram a venas anezo : hogen ar Giblyed a aozas ar hoad hag ar vein evid sevel an ti.

VI. Pennad.

Templ Salomon en diabarz hag en diavêz.

1. A-benn pevar-hant vloaz ha pevar-ugent, goude ma oa deuet bugale Izrael er-mêz euz a zouar an Ejipt, e miz Zio¹², an eil miz euz a ren Salomon war Izrael, eo e savas eun ti d'an Aotrou.

2. Hogen an ti a zave ar roue Salomon d'an Aotrou, en-doa tri-ugent ilinad a hed, hag ugent ilinad a led, ha tregont ilinad a uhelled.

3. Ha dirag an templ ez oa eur palier euz a ugent ilinad a hed, hevez al led euz an templ ; ha deg ilinad a led en-doa dirag an templ.

¹¹ kor : muzul (gweled "korus" uhellouh.

¹² Zio : en hebreeg (?)

4. Hag eñ a reas d'an templ prenestou beskelleg¹³.
5. Sevel a reas war voger an templ kombodou¹⁴ tro-war-dro, war mogeriou an ti hag an orakl¹⁵ ; ober a reas ivez kazeliou tro-war-dro.
6. Ar hombod izella en-doa pemp ilinad a led, ar hombod kreiz en-doa c'hweh ilinad a led, hag an trede en-doa seiz ilinad a led. Lakaad a reas an treustou war-dro d'an ti a-ziavêz, evid na harpjent ket war mogeriou an templ.
7. Pa oe savet an ti, e oe savet gand mein benet ha kempezet : ha ne oe klevet en ti na morzol, na bouhal, na benveg houarn ebed, e-pad ma oa savet.
8. Dor ar gazel greiz a oa en tu dehou euz an ti : ha dre zereziou-tro e pigned d'ar gambr kreiz, hag euz ar gambr-kreiz d'an drede.
9. Hag eñ a zavas an ti, hag e beurzavas, hag a holoas anezañ gand koaderez sedr.
10. Hag eñ a zavas eur hombod euz a bemp ilinad a uhelled war an oll di, hag a holoas anezañ gand koad sedr.
11. Hag an Aotrou a gomzas ouz Salomon, o lavaroud :
12. E-keñver an ti-ze a zavez, mar kerez em helennoù, mar sevenez va barnedigeziou, ha ma virez va oll hourhemennou, o kerzoud drezo, me a gretay ahanout va ger, em-eus lavaret da Zavid da dad.
13. Ha me a chomo e-kreiz bugale Izrael, ha ne zilezin ket va fobl a Izrael.
14. Salomon a zavas eta an ti, hag e beurzavas.
15. Hag eñ a holoas mogeriou an ti en diabarz gand elfennoù sedr, euz a leur an ti beteg lein ar mogeriou ; ha beteg ar solier, o goloas gand koad sedr en diabarz ; hag eñ a holoas leur an ti gand elfennoù sapr.
16. Sevel a reas ivez e goueled an templ elfennoù sedr euz a ugent ilinad, euz al leur beteg al lein ; hag eñ a reas an diabarz euz an orakl, e sant ar zent.
17. Hogen an templ en-doa daou-ugent ilinad adaleg dor an orakl ;
18. Hag an oll di en diabarz a oa goloet gand sedr, ha frammou ar hoad a oa greet gand kalz a ijin, ha kinklet gand kizelladuriou ha moulladuriou ; goloet e oa oll gand elfennoù sedr ; ha ne weled ket a vein er voger.
19. Hogen an orakl a reas e-kreiz an ti, en diabarz anezañ, evid lakaad eno arh kevredigez an Aotrou.
20. Hogen an orakl en-doa ugent ilinad a hed, hag ugent ilinad a led, hag ugent ilinad a uhelled : hag eñ a holoas hag a wiskas anezañ gand aour ar glanna, hag a holoas an aoter gand sedr.
21. Golei a reas ivez an ti dirag an orakl gand aour ar glanna, hag e stagas an taolennou gand tachou aour.
22. Ne oa netra en templ ha na oa ket goloet a aour : hag an aoter a oa dirag an orakl a oa ivez goloet oll a aour.
23. Ober a eras ivez en orakl daou gerubin gand koad olived, euz a zeg ilinad a uhelled.
24. Unan euz a askellou ar gerubined he-doa pemp ilinad, hag eben he-doa ivez pemp ilinad : evel-se ez oa deg ilinad adaleg penn eun askel beteg penn eben.
25. An eil gerubin en-doa ivez deg ilinad, euz a eun heveleb ment, hag an daou gerubin a oa euz a eun heveleb labour ;
26. Da lavaroud eo, m'en-doa unan euz ar gerubined deg ilinad a uhelled, hag egile kemend-all.

¹³ beskelleg : gand grillaj.

¹⁴ kombodou : estajennou ront.

¹⁵ orakl : an templ.

27. Lakaad a reas ar gerubined e-kreiz an templ en diabarz : hogen ar gerubined a astenne o diouaskel ; hag askel eur herubun a stoke ouz eur voger, hag askel an eil kerubin a stoke ouz ar voger all : hogen o diouaskel all a stoke an eil ouz eben e-kreiz an templ.

28. Golei a reas ivez gand aour ar gerubined.

29. Kizelladuriou ha moulladuriou a engravas war mogeriou an templ tro-war-dro ; hag eñ a reas enno kerubined, ha barrou palmez, ha livaduriou a beb doare ; evel pa zeujent er-mêz, ha pa zavjent euz ar voger.

30. Golei a reas ivez gand aour leur an ti, en diabarz hag en diavêz.

31. Evid mond en orakl e reas doriouigou koad olived, ha postou a bemp rann.

32. An diou zor-ze a reas gand koad olived : hag eñ a engravas en o skeudennou kerubined, ha doareou palmez, ha kizelladuriou a zave dreist : hag eñ o goloas gand aour, ken ar gerubined, ken ar barrou palmez, hag an traou all.

33. Ober a reas ivez e dor an templ postou koad olived a bevar rann :

34. Ha diou zor koad sapr en daou du : ha pep dor a oa daoubleget, hag a zigore oh en em zerhel stag o-diou.

35. Hag eñ a engravas kerubined, ha barrou palmez, ha kizelladuriou a zave dreist : hag eñ o goloas oll gand taolennou aour dioh ar reol hag ar skwer ;

36. Hag en unnegved bloaz, e miz Bul (hennez eo an eizved miz) e oe peurhreet an ti, e pep korn anezañ hag e pep tra. E seiz vloaz eta e savas anezañ.

VII. Pennad.

Ti Salomon. Labouriou Hiram.

1. Hogen Salomon a zavas, hag a beurzavas e di e-unan e trizeg vloaz.

2. Sevel a reas ivez an ti koad Liban euz a gant ilinad a hed, euz a hanter-kant ilinad a led, hag euz a dregont ilinad a uhelled : pevar bondalez a oa etre ar peuliuou sedr ; rag gand koad sedr e oa greet ar peuliuou.

3. Gand elfennou sedr e holoas an oll volz, pehini a oa harpet war pemp peul ha daou-ugent : rag pemzeg peul a oa e peb reñk.

4. Pere a oe lakaet an eil dirag egile,

5. Hag a zelle an eil oh egile ; o veza ma oant war eun hed kevatal : ha war ar peuliuou ez oa treustou pevar-horneg euz a eun heveleb ment.

6. Ober a reas ivez eur pondalez all a beuliuou euz a hanter-kant ilinad a hed, ha tregont ilinad a led : hag eur pondalez all rag eneb d'ar brasa, gand peuliuou, ha goloennou war ar peuliuou.

7. Ober a reas ivez pondalez an tron, e pehini edo ar gador-varn : hag eñ he goloas gand koad sedr adaleg al leur beteg al lein.

8. E-kreiz ar pondalez ez oa eun tiig, e pehini ez ee evid barna : hag hemañ a oa greet gand an heveleb labour. Ober a reas ivez evid merh Faraon, gand pehini e oa dimezet, eun ti en heveleb labour gand ar pondalez-se.

9. An tiez-se oll, adaleg traoñ beteg lein ar mogeriou, hag en diabarz kerkoulz hag en diavêz, a oa savet gand mein kaer, pere a oa bet benet en heveleb doare hag en heveleb ment.

10. An diazez a oa bet greet ivez gand mein kaer, gand mein braz euz a zeg hag euz a eiz ilinad.

11. Bez' e oa ivez war-horre mein kaer pere a oa bet benet en heveleb ment, hag a oa ivez goloet gand sedr.

12. Al leur vrasa a oa kelhet, hag he-doa teir reiz mein-ben, hag eur reiz treustou koad sedr, evel ma en em gave ivez en diabarz euz a leur ti an Aotrou, hag e dor-dal an ti.

13. Ar roue Salomon a gasas ivez da glaskoud Hiram euz a Dir,

14. Mab eun intañvez euz a vreuriez Neftali, hag euz eun tad a oa euz a Dir, micherour arem, den leun a furnez hag a boell, ha gouizieg e peb labour arem. Hag eñ, o veza deuet da gavoud ar roue Salomon, a reas e oll labour.

15. Ober a reas daou beul arem, euz a driweh ilinad pep hini : hag eur roued a zaouzeg ilinad a yee war-dro da bep peul.

16. Ober a reas ivez daou benn arem teuzet, evid lakaad war lein pep peul : unan euz ar pennou an-doa pemp ilinad a uhelled, hag egile ivez pemp ilinad.

17. Hag i a oa gweet an eil en egile evel rouejou hag evel chadennoù gand eul labour kaer. Pep penn peul a oa teuzet : seiz reiz maillou a oa e roued eur penn, ha seiz reiz maillou e roued egile.

18. Ober a reas ar peulioù-ze en heveleb doare ma'z oa diou reiz maillou war-dro da bep peul, war o fennou, ha dreist an avalou-grenad. Evel-se e reas an eil penn.

19. Ar pennou a oa e lein ar peulioù, e leur an nor-dal, a oa greet e doare lili, hag o-doa pevar ilinad.

20. Pennou all a oa e lein ar peulioù, dreist ar rouejou, diou ment ar peulioù : ha daou-hant aval-grenad a oa war-dro d'an eil penn-ze, e diou reiz.

21. Hag eñ a lakaas an daou beul-ze e dor-dal an templ : ha pa en-doa lakaet ar peul a-zehou, e halvas anezañ Jac'him. Sevel a reas ivez an eil peul, hag e halvas anezañ Booz.

22. Lakaad a reas war penn ar peulioù eul labour greet e doare lili : hag evel e oe peurhreet labour ar peulioù.

23. Ober a reas ivez eur mor teuz, euz a zeg ilinad euz an eil gor¹⁶ d'egile, hag eñ kelheg tro-war-dro : pemp ilinad a uhelled en-doa, hag eur gordennig a dregont ilinad a gelhie anezañ tro-war-dro.

24. Dindan e hor ez oa kizelladurioù tro-war-dro, deg etre peb ilinad : diou reiz kizelladurioù treuzet a oa.

25. Hag eñ a oa douget war daouzeg ejenn, a bere tri a zelle ouz an hanternoz, ha tri ouz ar huz-heol, ha tri ouz ar hreisteiz, ha tri ouz ar sav-heol ; hag ar mor a oa douget ganto : hag al lostou anezo a oa kuzet gantañ.

26. Teoder ar veol a oa euz a dri meutad : hag e hor a oa evel gor eur hop ; hag evel delioù eul lilienn zigor : ha daou vil bath¹⁷ a zalhe.

27. Ober a reas ivez deg troad¹⁸ arem ; ha pep hini anezo en-doa pevar ilinad a hed, ha pevar ilinad a led, ha tri ilinad a uhelled.

28. Ha labour an treid-se a oa kempezet : ha kizelladurioù a oa etre ar frammou.

29. Hag etre kurunennoùigou ha garlantezioù, ez oa leoned, hag ejenned, ha kerubined : hag ivez er frammou, ha war-horre, ez oa leoned hag ejenned, hag evel brennou¹⁹ arem a-zistribill.

¹⁶ gor : ribl.

¹⁷ bath : muzul (?)

¹⁸ troad : diazez.

¹⁹ brennou : garlantezioù.

30. Ha peder rod arem a oa dre bep troad, hag aheliou arem : hag er pevar horn ez oa evel skoaziouigou teuz dindan ar veol, pere a zelle an eil oh eben.

31. Genou ar veol en diabarz a oa e lein ar penn : hag ar pez a weled anezi en diavêz, a oa euz a eun ilinad ha kelheg oll ; hag evel-se en-doa eun ilinad hanter : e korniou ar peulioù ez oa kalz kizelladurioù : hag ar pez a oa etre ar peulioù a oa pevarhorneg ha ne oa ket kelheg.

32. Ar peder rod a oa e pevar horn an treid, a oa frammet oll dindan an treid : peb rod he-doa eun ilinad hanter a uhelled.

33. Ar rodou-ze a oa heñvel ouz rodou eur harr : o aheliou, hag o empennoù²⁰, hag o hammedou, hag o bendelioù a oa teuzet oll.

34. Rag ar peder skoazig²¹ a oa e pevar horn pep troad, a oa frammet gand an troad, ha teuzet gantañ.

35. E lein an troad ez oa eur ribl kelheg euz a eun hanter ilinad, ha greet en heveleb doare ma helle ar veol mond e-barz : hag eñ a oa engravet ha kizellet ennañ e-unan.

36. Ober a reas ivez e elfennoù arem, hag er hornioù, kerubined, ha leoned, ha barroù palmez, hag i evel tud en o zav ; evid na vijent ket gwelet evel traou kizellet, hogen evel traou lakaet tro-war-dro.

37. Evel-se e reas deg troad en eun teuz, diou eur vent, hag eun heveleb kizelladur.

38. Ober a reas ivez deg beol arem : peb beol a zalhe daou-ugent bath, hag en-doa pevar ilinad : lakaad a reas peb beol war pep hini euz an deg troad.

39. Hag eñ a lakaas pemp beol en tu dehou euz an templ, ha pemp en tu kleiz : hag ar mor a lakaas en tu dehou euz an templ etre ar sav-heol hag ar hreisteiz.

40. Hiram a reas ivez podou, ha kaoterioù, ha pilligoù ; hag eñ a beurhreas oll labour ar roue Salomon e templ an Aotrou.

41. Daou beul ha diou gordennig war pennoù ar peulioù : ha diou rouedig evid golei an diou gordennig a oa war pennoù ar peulioù ;

42. Ha pevar-hant aval-grenad en diou rouedig ; diou reiz avalou-grenad e peb rouedig evid golei kordennoùigoù ar pennoù a oa e lein ar peulioù ;

43. Ha deg troad, ha deg beol war an treid ;

44. Hag eur mor, ha daouzeg ejenn dindan ar mor ;

45. Ha podou, ha kaoterioù, ha pilligoù ; an oll listri a reas Hiram d'ar roue Salomon evid ti an Aotrou, a oa euz a arem ar glanna.

46. Ar roue a lakaas o zeuzi en eur gompezenn tost d'ar Jourdan, en eun douar prieg, etre Sokot ha Sartan.

47. Ha Salomon a lakaas an oll listri en templ : hogen hervez an niver braz anezo, ne oe ket anavezet ar pouez euz an arem.

48. Salomon a lakaas ivez da ober an oll listri evid ti an Aotrou ; an aoter aour, hag an daol aour, war pehini e tleed da lakaad ar baraou kinnig :

49. Hag ar hantolerioù aour, pemp a-zehou, ha pemp a-gleiz, dirag an orakl euz a aour ar glanna : hag evel bokejou lili, ha dreisto kleuzeurioù aour, ha gultanioù²² aour ;

50. Ha potevioù, ha ferierigoùuz, ha kopou, ha listri-brev, hag ezañsoueroù, euz an aour ar glanna : ha mudurunou dorioù an ti a-ziabarz Sant ar Zent²³, ha dorioù ti an templ, a oa greet gand aour.

²⁰ empennoù : skinou-rod (?)

²¹ skoazig : korn (?)

²² gultanioù : mouchetez.

51. Evel-se e peurhreas an oll labour en-doa gourhemennet Salomon evid ti an Aotrou. Ha Salomon a gasas e-barz an arhant hag an aour hag al listri en-doa gouestlet David e dad, hag e lakaas anezo e teñzoriou ti an Aotrou.

VIII. Pennad.

Gouel sakrerez an templ.

1. Neuze oll henaoured Izrael gand priñsed ar breuriezou hag ar pennou tiad bugale Izrael, en em zastumas hag a yeas da gavoud ar roue Salomon e Jeruzalem, evid ma tezougjent arh kevredigez an Aotrou euz a gêr David, da lavaroud eo euz a Zion.

2. Hga oll dud Izrael en em zastumas etrezeg Salomon, en eun deiz gouel, e miz Etanim, pehini eo ar seizved miz.

3. Hag oll henaoured Izrael a zeuas, hag ar veleien a gemeras an arh,

4. Hag a zougas arh an Aotrou, ha tabernakl ar gevredigez, hag oll listri ar santuar, a oa en tabernakl : hag ar veleien hag al Levited a zouge anezo.

5. Hogen ar roue Salomon hag oll dud Izrael pere a oa en em zastumet en-dro dezañ, a valee gantañ e-raog an arh, hag i a laze deñved hag ejenned dibriz ha diniver.

6. Hag ar veleien a zegasas arh kevredigez an Aotrou en he leh, e orakl an templ, e Sant ar Zent, dindan askellou ar Gerubined.

7. Rag ar Gerubined a astenne o diouaskel war leh an arh, hag a holoe anezi, hag ivez he barrou.

8. Hag ar barrou a dennjont, en heveleb doare ma oa gwelet o fennou er santuar dirag an orakl, ha ne oant ket gwelet er-mêz : hag i a zo chomet eno beteg-henn.

9. Hogen ne oa netra en arh, nemed an diou daolenn vên en-doa lakaet enni Moizez e Horeb, pa reas an Aotrou kevredigez gand bugale Izrael, pa zeuent er-mêz euz a vro an Ejipt.

10. Hogen pa zeuas ar veleien er-mêz euz ar santuar, eur goabrenn a leunias ti an Aotrou,

11. Hag ar veleien ne hellent ket chom eno, nag ober o harg, en abeg d'ar goabrenn : rag gloar an Aotrou he-doa karget ti an Aotrou.

12. Neuze Salomon a lavaras : An Aotrou en-deus lavaret e chomje en eur goabrenn.

13. Savet em-eus an ti-mañ evid ma chomi ennañ, ha ma vezo stard da dron da viken.

14. Hag ar roue oh en em drei, a vennigas oll vagad Izrael : rag oll dud Izrael a oa dastumet.

15. Ha Salomon a lavaras : Benniget ra vezo an Aotrou, Doue Izrael, pehini en-deus komzet gand e henou ouz David va zad, hag en-deus sevenet e her dre e halloud, o lavaroud :

16. Abaoe an deiz e pehini em-eus tennet va fobl Izrael euz an Ejipt, n'em-eus ket dilennet eur gêr e-touez oll vreuriezou Izrael, evid ma vije savet eun ti, ha ma vije va ano eno : hogen dilennet em-eus David da veza war va fobl Izrael.

²³ mudurunou doriou an ti a-ziabarz Sant ar Zent : mudurunou doriou ti ziabarz Sant ar Zent.

17. Ha David va zad a fellas dezañ sevel eun ti da ano an Aotrou, Doue Izrael.
18. Hag an Aotrou a lavaras da Zavid, va zad : Pa eh-eus mennet en da galon sevel eun ti d'am ano, eh-eus greet mad kaoud ar mennoz-se.
19. Ha koulskoude n'eo ket te a zavo eun ti din, hogen da vab pehini a zeuio er-mêz euz da ziougroazell ; henez eo a zavo eun ti d'am ano.
20. Sevenet eo bet gand an Aotrou ar ger en-doa lavaret : Savet on e-leh David va zad, hag azezet on war tron Izrael, evel ma en-deus lavaret an Aotrou ; ha savet em-eus eun ti da ano an Aotrou, Doue Izrael.
21. Ha merket em-eus eno leh an arh, e pehini ema ar gevredigez en-deus greet an Aotrou gand on tadou, pa int deuet er-mêz euz a vro an Ejipt.
22. Hogen Salomon en em lakaas en e zav dirag aoter an Aotrou e gwel oll strollad Izrael, hag a astennas e zaouarn etrezeg an neñv,
23. Hag a lavaras : Aotrou, Doue Izrael, n'eus ket a Zoue heñvel ouzit, nag en neñv a-uz, na war an douar a-iz ; te pehini a vir ar gevredigez hag an drugarez eh-eus greet d'az servijerien, pere a gerz dirazout a-greiz o halon.
24. Te pehini eh-eus miret da Zavid, va zad, da zervijer, ar pez ez-poa lavaret dezañ. Gand da henou eh-eus komzet, ha gand da zaouarn eh-eus peurbreet, evel ma ro da wir an deiz-mañ.
25. Bremañ eta, Aotrou, Doue Izrael, mir da Zavid, va zad, da zervijer, ar pez eh-eus lavaret dezañ evel-henn : Ne vezo ket tennet diouzit an hini a dle azeza dirazon war tron Izrael ; gand ma viro koulskoude da vugale o hent, ha ma kerzint dirazon evel ma eh-eus kerzet-te dirazon.
26. Hogen bremañ, Aotrou, Doue Izrael, seven ar geriou eh-eus lavaret da Zavid, va zad, da zervijer.
27. Piou a hellfe kredi penaoz e chom evid gwir Doue war an douar ? Rag ma ne hell an neñv na neñv an neñvou derhel ahanout, gand pegen nebeud a wir her gra an ti-mañ em-eus savet ?
28. Hogen sell ouz pedenn da zervijer, hag ouz e houlennoù, Aotrou, va Doue ; selaou ar ganaouenn hag ar bedenn a ra hirio da zervijer dirazout :
29. Evid ma vezo da zaoulagad digor war an ti-mañ, war an ti a behini eh-eus lavaret : Va ano a vezo eno ; evid ma klevi ouz ar bedenn a ra da zervijer el leh-mañ ;
30. Evid ma klevi pedenn da zervijer ha re da bobl Izrael, ken aliez gwech ma pedint el leh-mañ e pehini e chomez en neñv ; ha pa'z-pezo klevet outo, ma vezi trugarezuz en o heñver.
31. Ma en-deus pehet eun den a-eneb e nesa, ha ma en-deus torret al le gand pehini e oa ereet ; ha mar deu en abeg d'e le dirag da aoter en da di ;
32. Te a zelaouo euz an neñv ; te a varno da zervijerien, o tamalloud an hini fallagr hag o tisteurel e fallagriez war e benn, hag o tidamalloud ar re vad, o rei dezo hervez ma'z eo dleet.
33. Pa deho da bobl Izrael a-raog he enebourien (rag pehi a dle en da eneb), mar greont²⁴ pinijenn, mar meulont da ano, ma teuont ha mar pedont, ha mar goulennont da drugarez en ti-mañ,
34. Selaou euz an neñv, ha distaol he fehed d'az pobl Izrael, ha degas anezo d'an douar eh-eus roet d'o zadou.

²⁴ greont : al liester hag er verbou da heul : tud pobl Izrael.

35. Mar bez serret an neñv, ha ma ne gouez ket a hlao en abeg d'o fehed ; mar pedont el leh-mañ, mar greont pinijenn en da ano, ha mar distroont dioh o fehejou en abeg d'o glahar ;

36. Selaou anezo euz an neñv, ha distaol pehejou da zervijerien, ha da bobl Izrael : ha diskouez dezo an hent mad dre behini e kerzint, ha ro glao war da zouar eh-eus roet d'az pobl e kerz.

37. Mar sav war an douar eun naonegez, pe eur vosenn, pe eun tez, pe an duan, pe ar hilleien-raden, pe an intr, pe mar bez gwanet gand he enebour o taga he doriou ; pe ma en-deus eur gouli pe eur hleñved bennag ;

38. Kement den euz da bobl Izrael a ginnigo dit e ouestlou pe e bedennou ; hag oh anaoud gouli e galon, ma astenn e zaouarn en ti-mañ ;

39. Te a zelaouo euz an neñv, euz al leh e pehini e chomez : en em unvani a ri ganto hag e ri dezo, da bep hini hervez e heñchou, dioh ma weli o halon (rag n'eus nemedout a anavezje kalon oll vugale an dud),

40. Evid ma toujint ahanout e oll zeiziou ha ma vevint war horre an douar, eh-eus roet d'on tadou.

41. Pa zeuy eun diavêziad, pehini ne vezo ket euz da bobl, euz a eur vro bell en abeg d'az ano (rag klevet e vezo meneg e pep tu euz da ano braz, hag euz da zorn kreñv, hag euz da vreh astennet),

42. Pa vezo deuet eta, ha pa en-devezo pedet el leh-mañ,

43. Te a zelaouo euz an neñv, euz an oabl e pehini e chomez ; hag e ri kement a houlenno an diavêziad ; evid ma tesko oll boblou an douar douja da ano, evel ma ra da bobl Izrael, ha ma welint o-unan penaoz eo bet galvet da ano war an ti-mañ em-eus savet.

44. Pa'z ay da bobl d'ar brezel a-eneb da enebourien, dre an hent dre behini ez-pezo o haset ; mar pedont ahanout, o selloud ouz ar gêr eh-eus dilennet, hag ouz an ti em-eus savet en da ano,

45. Te a zelaouo euz an neñv o fedennou, hag o goulennou, hag a varno anezo.

46. Mar pehont en da eneb (rag n'eus den ebed na na behje) , hag o vond droug ennout en o eneb, mar lakaez anezo etre daouarn o enebourien : ha mar bezont kaset da sklaved e douar o enebourien a-bell pe a-dost ;

47. Ha mar greont pinijenn en o halon e leh o sklaverez ; ha mar distroont ouzit en o sklaverez, ha mar pedont ahanout, o lavaroud : Pehet on-eus, droug ha fallagriez on-eus greet :

48. Ha mar distroont ouzit euz a-greiz o halon, hag euz a-greiz o ene, e douar o enebourien e pehini e vezint bet kaset sklaved ; ha mar pedont ahanout, o selloud ouz an douar eh-eus roet d'o zadou, hag ouz ar gêr eh-eus dilennet, hag ouz an templ am-eus savet d'az ano :

49. Te a zelaouo euz an neñv, euz an oabl e pehini ema da dron, o fedennou hag o goulennou, hag a varno anezo :

50. En em unvani a ri gand da bobl pehini he-deus pehet en da eneb, ha disteurel a ri dezo an oll fallagriezou he-deus greet ouzit : ha te a lakay da zével trugarez er re gand pere e vezint sklaved, evid ma o-devezo truez outo.

51. Rag da bobl ha da zegouez int ; ha te eo eh-eus o zennet euz a vro an Ejipt, euz a-greiz ar forn houarn :

52. Evid ma vezo digor da zaoulagad ouz pedenn da zervijer, ha da bobl Izrael, ha ma selaoui outo e kement goulenn a raint dit.

53. Rag te eo eh-eus o rannet euz a-douez oll boblou an douar, da zegouez dit, evel ma eh-eus e lavaret dre henou Moizez, da zervijer, pa eh-eus tennet on tadou euz an Ejipt, o ! Aotrou, va Doue.

54. Hogen pa en-doe Salomon peurginniget ar bedenn, hag ar goulenn-ze d'an Aotrou, e savas a-zirag aoter an Aotrou : rag lakaet en-doa e zaoulin d'an douar, hag astennet en-doa e zaouarn etrezeg an neñv.

55. Hag eñ a zavas, hag a vennigas oll vagad Izrael, gand eur vouez kreñv, o lavaroud :

56. Benniget ra vezo an Aotrou, pehini en-deus roet an ehan d'e bobl Izrael, hervez kement en-doa lavaret : n'eus ket kouezet eur ger hepken, euz an oll re vad a zo bet lavaret gand Moizez e zervijer.

57. Ra vezo an Aotrou, on Doue, ganeom, evel ma eo bet gand on tadou ; na zilezet ket ahanom, ha na zistaolet ket ahanom.

58. Hogen ra denno or halonou etrezeg ennañ, evid ma kerzime en e oll heñchou, ha ma virim e hourhemennou, hag e lidou, hag e varnedigeziou, evel ma en-deus o hemennet d'on tadou.

59. Ha ra vezo ar geriou-mañ, dre bere em-eus pedet dirag an Aotrou, tost d'an Aotrou, on Doue, deiz ha noz, evid ma ray barnedigez bemdez reiz d'e zervijer ha d'e bobl Izrael,

60. Evid ma ouezo oll boblou an douar, penaoz an Aotrou eo Doue e-unan, ha n'eus hini all nemetañ.

61. Ra vezo ivez klok or halon gand an Aotrou, on Doue, evid ma kerzime hervez e gelennoù, ha ma virim e hourhemennou, evel ma reom hirio.

62. Ar roue eta, hag oll Izrael gantañ, a laze viktimou dirag an Aotrou.

63. Ha Salomon a lazas ostivou a beoh, hag a ginnigas d'an Aotrou daou vil ejenn warn-ugent, ha c'hweh ugent mil dañvad : hag ar roue gand bugale Izrael a ouestlas templ an Aotrou.

64. En deiz-se ar roue a zantellaas kreiz al leur a oa dirag ti an Aotrou : rag eñ a ginnigas eno sakrifisou-losk ha sakrifisou all, ha lard ar viktimou a beoh, o veza ma oa re vihan an aoter arem a oa dirag an Aotrou, ha na helled ket lakaad warnezi ar sakrifisou-losk, hag ar sakrifisou all, ha lard ar viktimou a beoh,

65. Salomon a reas eta neuze eur gouel brudet-braz, hag oll Izrael gantañ, en eur rumm braz, adaleg dor Emat beteg ster an Ejipt, dirag an Aotrou on Doue, e-pad seiz devez ha seiz devez, da lavaroud eo pevarzeg devez.

66. Hag an eizved devez e kasas ar poblou²⁵ kuit, hag ar re-mañ a vennige ar roue, hag a zistroas d'o zeltou laouen-braz, ha gand eur galon dreo evid an oll vadou en-doa greet an Aotrou da Zavid e zervijer, ha da Izrael e bobl.

IX. Pennad.

An Aotrou en em ziskouez adarre da Zalomon. Kalz kêriou a zav.

1. Pa en-doe peurhreet Salomon ti an Aotrou, ha ti ar roue, ha kement en-doa c'hoantaet, ha ma oa fellet dezañ da ober,

2. En em ziskouezas an Aotrou dezañ eun eil gwech evel ma oa en em ziskouezet dezañ e Gabaon.

²⁵ ar poblou : tud ar bobl.

3. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : selaouet em-esu ouz da bedenn hag ouz ar goulenn eh-eus greet dirazon : santellaet em-eus an ti-mañ eh-eus savet, evid ma lakajen eno va ano da viken ; ha va daoulagad ha va halon a vezo eno bepred.

4. Ha te, mar kerzez dirazon, evel ma en-deus kerzet da dad, en eeunder a galon hag er reizded ; mar grez kement em-eus gourhemennet dit, ha mar mirez va lezennou ha va barnedigeziou,

5. Me a lakay da dron da ren war Izrael da viken, evel ma em-eus komzet ouz David da dad, o lavaroud : Ne vezo ket tennet eun den euz da ouenn diwar tron Izrael.

6. Hogen mar distroit diouzin, c’hwi hag ho pugale ; ma n’em heuliit ket, ha ma ne virit ket va gourhemennou, ha va lidou, evel ma em-eus o roet deoh, ha ma’z it da gavoud doueed a-ziavêz, ha ma azeulit anezo ;

7. Me a denno Izrael diwar horre an douar em-eus roet dezo : an ti-ze em-eus santellaet em ano a daolin pell diou va daoulagad : hag Izrael a vezo da zorhenn ha da hoap e-touez an oll boblou.

8. Hag an ti-mañ a vezo da skwer : Kement hini a dremeno e-biou dezañ, a vezo souezet, hag a hwibano, o lavaroud : Perag en-deus greet an Aotrou kement-se d’an douar-mañ ha d’an ti-mañ ?

9. Hag i a lavaro : O veza ma o-deus dilezet an Aotrou o Doue, pehini en-doa tennet o zadou euz a zouar an Ejipt, ha ma o-deus heuliet doueed a-ziavêz, oh azeuli hag o lida anezo : rag se en-deus an Aotrou degaset an oll zroug-se warnezo.

10. Hogen a-benn ugent vloaz goude m’en-doe savet Salomon an daou di, da lavaroud eo ti an Aotrou, ha ti ar roue,

11. (Hiram o veza kaset da Zalomon koad sedr ha koad sapr, hag an aour hervez an ezomm en-doa), neuze Salomon a roas da Hiram ugent kêr e bro Galile.

12. Hag Hiram a zeuas euz a Dir evid gweloud ar hêriou en-doa roet Salomon dezañ, ha ne blijjont ket dezañ ;

13. Hag eñ a lavaras : Hag ar re-ze eo ar hêriou eh-eus roet din, va breur ? Hag eñ o galvas douar Chabul, evel ma eo galvet bete-vremañ.

14. Hiram a gasas ivez d’ar roue Salomon c’hweh-ugent talant aour.

15. Setu perag e savas ar roue Salomon teltou ; evid sevel ti an Aotrou hag e di e-unan, ha Mello, ha mur Jeruzalem, hag Hesar, ha Mageddo, ha Gazer.

16. Faraon, roue an Ejipt, a oa pignet, en-doa kemeret Gazer, hag en-doa lakaet an tan enni : lazet en-doa ar Hananeed a chom e kêr, hag he roet en-doa d’e verh, gwreg Salomon.

17. Salomon eta a zavas Gazer, ha Bethoron an izella,

18. Ha Baalat, ha Palmira e bro an distro.

19. Kreñvaad a reas ivez an oll vourhiou a oa dezañ, hag a oa divur, ha kêriou ar hirri, ha kêriou ar varheien, ha kement a gavas mad da zevel Jeruzalem, hag el Liban, hag e oll zouar e rounatelez.

20. E-keñver an oll bobl a oa chomet euz an Amorreed, hag euz an Heteed, hag euz ar Ferezeed, hag euz an Heveed, hag euz ar Jebuzeed, pera ne oant ket euz a vugale Izrael ;

21. Salomon a lakaas o bugale pere a oa chomet er vro, heb beza bet lazet gand bugale Izrael, da bae gwiriou, evel ma reont c’hoaz bremañ.

22. Hogen Salomon ne lakaas hini euz a vugale Izrael da zervija : i a oa e vrezelidi, e vinistred, hag e briñsed, ha pennou e arme, ha renerien e girri hag e varheien.

23. Hogen pemp-kant priñs hag hanter-kant a oa war labouriou Salomon, pere o-doa galloud war ar bobl, hag a roe e urz diwar-benn an oll labouriou.

24. Merh Faraon a bignas euz a gêr David d'he zi heh-unan, en-doa savet Salomon dezi : neuze e savas Mello.

25. Salomon a ginnige ivez teir gwech er bloaz sakrifisou-losk, hag ostivou a beoh war an aoter en-doa savet d'an Aotrou ; hag eñ a zeve louzou c'hwez-vad dirag an Aotrou : hag an templ a oe peurhreet.

26. Ar roue Salomon a reas ivez listri-mor e Asiongaber, pehini a zo tost da Elat, war aod ar mor Ruz, e bro an Idume.

27. Hag Hiram a gasas war al listri-ze euz e zervijerien, merdeidi, pere a oa gouizieg dioh ar mor, gand servijerien Salomon.

28. Hag i, o vza eet da Ofir, a gemeras eno pevar-hant ugent talant aour , a zegasjont d'ar roue Salomon.

X. Pennad.

Rouanez Saba a zeu da gavoud Salomon.

1. Hogen rouanez Saba, o veza klevet komz euz a Zalomon, e kement en-doa greet e ano an Aotrou, a zeuas evid e arnodi gand lavariou-goloet.

2. Hag hi, o veza deuet da Jeruzalem gand eun heul braz²⁶ ha kalz madou, gand kañvaled, pere a zouge louzou c'hwez-vad, ha kalz a aour, ha mein talvouduz, a yeas da gavoud ar roue Salomon, hag a lavaras dezañ kement a oa war he halon.

3. Ha Salomon a zeskas anezi war kement ger a lavaras-hi dezañ : ha n'en em gavas lavar ebed a gement a oe kuzet d'ar roue ha na hellas ket displega dezi.

4. Hogen rouanez Saba o weloud oll furnez Salomon, hag an ti en-doa savet,

5. Ha boued e daol, ha tiez e zervijerien, ha reiz e vinistred, hag o dillad, hag o hoperien, hag ar sakrifisou-losk a ginnige e ti an Aotrou, ne oa mui he spered ganti.

6. Hag hi a lavaras d'ar roue : Gwir eo ar pezh em-eus klevet em bro,

7. Diwar-benn da lavariou, ha diwar-benn da furnez : ha ne greden ket ar pezh a lavaret din, ken na on deuet, ha ma em-eus gwelet gand va daoulagad, ha ma em-eus anavezet penaoz ne oa ket bet lavaret din an hanter euz ar pezh a oa. Brasoh eo da furnez ha da oberiou eged ar vrud em-eus klevet.

8. Eüruz eo da dud, eüruz eo da zervijerien, pere a zo bepred dirazout, hag a glev da furnez.

9. Benniget ra vezo an Aotrou da Zoue, da behini eh-eus plijet, ha pehini en-deus da lakaet war dron Izrael, o veza ma en-deus an Aotrou karet Izrael da viken, hag en-deus da lakaet da roue, evid ma rajes barn ha reiz.

10. Hag hi a roas d'ar roue c'hweh-ugent talant aour, ha kalz louzou c'hwez-vad, ha mein talvouduz-braz : biskoaz n'eo bet degaset kemend-all a louzou c'hwez-vad, evel ma roas rouanez Saba d'ar roue Salomon.

11. Listri Hiram pere a zouge an aour euz a Ofir, a zegasas ivez euz a Ofir kalz koad c'hwez-vad, ha mein talvouduz-braz.

²⁶ eun heul braz : eur bern tud ganti.

12. Hag ar roue a reas gand ar hoad c’hwez-vad gwerzidi²⁷ ti an Aotrou, ha ti ar roue, ha telennou ha lirennou evid ar varzed : ha n’eo ket degaset, ha n’eo bet gwelet koad c’hwez-vad beteg-henn.

13. Hogen ar roue Salomon a roas da rouanez Saba kement ha ma hoantaas-hi ha ma houennas digantañ ; heb niveri ar pezh en-doa roet dezi gand eul largentez a roue. Hag hi a yeas kuit, hag a zistroas d’he bro gand he zud.

14. Pouez an aour a zouged beb bloaz da Zalomon a oa euz a hweh-kant talant aour c’hweh ha tri-ugent :

15. Heb niveri ar pezh a zegase ar re a oa e penn ar gwiriou, hag ar varhadourien, hag ar re a werze traou dibaot, hag oll roueed an Arabia, ha renerien ar vro.

16. Ar roue Salomon a reas ivez daou-hant tirenn²⁸ aour ar glanna : c’hweh-kant sikl aour a roas evid pep tirenn.

17. Ober a reas ivez tri-hant tirennig aour glan : tri-hant min²⁹ aour a oa e pep tirennig. Hag ar roue o lakaas e ti koad³⁰ al Liban.

18. Ar roue Salomon a reas ivez eun tron braz gand olifant, hag eñ e wiskas gand aour ar melenna.

19. C’hweh daez³¹ en-doa : ha lein an tron a oa kelheg en e ziadreñv : ha daou zorn tu-mañ ha tu-hont a zalhe ar sich³² : ha daou leon a oa oh an daou zorn.

20. Daouzeg leon bihan a oa war ar c’hweh daez tu-mañ ha tu-hont : n’eo bet greet³³ labour ebed heñvel ouz hemañ en oll rouanteleziou.

21. Kement lestr e pehini eh eve ar roue Salomon a oa a aour : hag oll arbeuri ti koad Liban a oa euz a aour ar glanna. Ne oant ket greet gand arhant ; rag netra ne oa kavet kaer a-walh e deiziou Salomon ;

22. Rag listri-mor ar roue, gand listri Hiram a yee eur wech bep tri bloaz da Darsis, hag a zegase ahano aour, hag arhant, ha dent olifanted, ha marmouzed, ha pauned.

23. Ar roue Salomon eta a oe dreist oll roueed an douar gand e vadou ha gand e furnez.

24. Hag an oll zouar a hoantee gweloud dremm Salomon, ha selaoui e furnez, en-doa roet David en e galon.

25. Ha pep hini a zegase dezañ bep bloaz roou, listri arhant hag aour, dillad hag armou evid ar brezel, ha louzou c’hwez-vad, ha kezeg ha muled.

26. Ha Salomon a zastumas kirri ha marheien : hag eñ en-doe pevarzeg kant karr, ha daouzeg mil marheg : hag eñ a lakaas anezo dre ar hêriou, hag e-tal ar roue e Jeruzalem.

27. Lakaad a reas an arhant da veza ker stank e Jeruzalem evel ar vein ; ha ma oe gwelet kement a zedr evel a skao-gwrah a zave er mêziou.

28. Degas a reed kezeg da Zalomon euz an Ejipt hag euz a Goa : rag marhadourien ar roue o frene e Koa, hag o degase diou eur priz³⁴.

²⁷ gwerzidi : balustrou.

²⁸ tirenn : skoed.

²⁹ min : mengleuz.

³⁰ koad : forest.

³¹ daez : derez.

³² sich : sichenn.

³³ n’eo bet greet : n’eus bet greet.

³⁴ diou eur priz : eur priz bet merket.

29. Dond a ree er-mêz euz an Ejipt pevar marh evid c’hweh-kant sikl arhant hag eur marh evid kant hag hanter-kant. Hag evel-se oll roueed an Heteed hag ar Siria a werze o hezeg.

XI. Pennad.

Salomon a zo touellet gand ar merhed, hag en em ro d’an idolatri.

1. Hogen ar roue Salomon a garas kalz merhed a-ziavêz (heb niveri merh Faraon), ha Moabitezed, hag Ammonitezed, hag Idumeezed, ha Sidoniezed, hag Hetezeed,

2. Euz ar broadou diwar-benn pere en-deus lavaret an Aotrou da vugale Izrael : ne gemeri³⁵ ket ar gwragez en o zouez, hag i ne gemerint ket a wragez euz da douez : rag i a zistrofe ho kalonou, evid ma heuillfeh o doueed. Hogen Salomon en em stagas outo gand eur galon karantezuz-braz.

3. Hag eñ en-doe seiz-kant gwreg e doare rouanezed, ha tri-hant gwreg-serh : hag ar gwragez-se a douellas e galon.

4. Ha pa edo koz dija, e oe saotret e galon gand ar merhed, a lakaas anezañ da heulia doueed a-ziavêz ; ha ne oa ket klok³⁶ e galon dirag an Aotrou e Zoue, evel ma oa bet kalon David, e dad.

5. Hogen Salomon a azeulas Astarte, doueez ar Sidonied, ha Moloc’h, idol an Ammonited.

6. Ha Salomon a reas ar pezh na blije ket d’an Aotrou, ha ne heuillas ket an Aotrou bepred, evel m’en-doa greet David, e dad.

7. Neuze Salomon a zavas eun templ da Hamos, idol ar Voabited, war ar menez a zo war harz Jeruzalem, ha da Voloc’h, idol bugale Ammon.

8. Hag evel-se e reas evid e oll wragez a-ziavêz, pere a zeve ezañs, hag a ree sakrifisou d’o doueed.

9. Sevel a reas eta droug en Aotrou ouz Salomon, o veza m’en-doa distroet e galon diou an Aotrou, Doue Izrael, pehini a oa en em ziskouezet dezañ eun eil gwech,

10. Hag en-doa gourhemennet dezañ an dra-mañ, na heuillfe ket doueed a-ziavêz ; ha n’en-deus ket miret ar pezh en-deus gourhemennet an Aotrou.

11. Rag se e lavaras an Aotrou da Zalomon : O veza ma eo bet kement-se ennout, ha n’eh-eus ket miret va hevredigez, nag ar hemennou em-boa greet dit, me a rogo hag a ranno da rouantelez, hag a roy anezi da unan euz da zervijerien.

12. Koulskoude n’her grin ket en da zeiziou, en abeg da Zavid da dad : euz a zorn da vab e rannin anezi.

13. Ne dennin ket ar rouantelez oll dioutañ ; hogen eur vreuriezh a roin d’az mab, en abeg da Zavid, va zervijer, hag en abeg da Jeruzalem em-eus dilennet.

14. Hogen an Aotrou a lakaas da zavel da enebour da Zalomon Adad, an Idumead, euz a ouenn ar roue a oa e Edom.

15. Rag pa edo David en Idumea, Joab, priñs ar vrezelidi, a bignas evid bezia ar re a oa bet lazeta, hag evid laza an oll baotred en Idumea.

³⁵ ne gemeri : eur meskaj a zo etre “te” ha “c’hwi”.

³⁶ klok : penn-da-benn.

16. (Hogen Joab a chomas eno e-pad seiz miz, hag Izrael oll, endra ma laze oll baotred an Idumea) ;

17. Adad a dehas, ha gantañ Idumeed, servijerien e dad, evid mond en Ejipt : hogen Adad a oa neuze eur bugel.

18. Hag i o veza savet euz a Vadian, a zeuas da Faran, hag o veza kemeret ganto tud euz a Faran, ez ejont en Ejipt etrezeg Faraon, roue an Ejipt, pehini a roas eun ti da Adad, a lakaas rei boued dezañ, hag a roas douar dezañ.

19. Hag Adad a gavas eun drugarez vraz dirag Faraon, en heveleb doare ma roas dezañ da wreg c'hoar-gompez ar rouanez Tafaez, e wreg e-unan³⁷.

20. Ha c'hoar Tafaez a hanas dezañ eur mab anvet Genubat ; ha Tafaez a vagas anezañ e ti Faraon : ha Genubat a chome e ti Faraon gand e vugale³⁸.

21. Pa glevas Adad en Ejipt penaoz e oa kousket David gand e dadou, ha penaoz e oa maro Joab, priñs ar vrezelidi, e lavaras da Faraon : Va lez da vond d'am bro.

22. Ha Faraon a lavaras dezañ : Petra a ziuerez-te em zi, evid ma klaskfes mond d'az pro ? Hag eñ a lavaras : Netra, hogen da bedi a ran d'am lezel da vond.

23. Doue a lakaas ivez da zavel en e eneb Razon, mab Eliada, pehini a oa tehet diouh Adarezer, roue Soba e aotrou.

24. Hag eñ a strollas tud outañ, hag a zeuas da briñs al laeron, pa laze David anezo : hag i a yeas da Zamas, hag a chomas eno, hag a lakaas anezañ da roue e Damas.

25. Hag eñ a oe da enebour da Izrael e oll zeziou Salomon : hag ahano droug Adad, hag ar gas en-doa ouz Izrael : hag eñ a renas e Siria.

26. Jeroboam, mab Nabat, Efratead euz a Zareda, servijer Salomon, ha pehini en-doa da vamm eur wreg intañvez anvet Sarva, a zavas ivez e zorn a-eneb ar roue.

27. Ha setu amañ an abeg euz e zispah a-eneb ar roue, o veza m'en-doa Salomon savet Mello, ha m'en-doa kompezet poull kêr David, e dad.

28. Hogen Jeroboam a oa eun den kreñv ha galloudeg ; ha Salomon, o weloud penaoz e oa eur paotr skiantel-mad ha gweñv, a lakaas anezañ da benn war tellou oll di Jozef.

29. C'hoarvezoud a reas en amzer-ze penaoz Jeroboam a zeue er-mêz euz a Jeruzalem, hag ar profed Ahias, ar Siloniad, a gavas anezañ en hent ; hag hemañ en-doa war e gein eur vantell nevez : hogen ne oa nemeto o-daou er park.

30. Hag Ahias o kemeroud ar vantell nevez a oa warnezañ, he rogas e daouzeg lodenn.

31. Hag eñ a lavaras da Jeroboam : Kemer deg lodenn evidout ; rag setu petra a lavar an Aotrou, Doue Izrael : Setu me a rogo ar rouantelez euz a zorn Salomon, hag e roin dit deg breuriez.

32. Koulskoude e chomo dezañ eur vreuriez, en abeg da Zavid va zervijer, ha d'ar gêr a Jeruzalem, em-eus dilennet e-touez oll vreuriezou Izrael.

33. O veza ma en-deus va dilezet, ha ma en-deus azeulet Astarte, doueez ar Sidonied, ha C'hamos, doue Moab, ha Moloc'h, doue bugale Ammon : ha n'eo ket kerzet em heñchou, evid ober ar pez a oa reiz dirazon, hag evid miroud va helennou ha va barnedigeziou evel David, e dad.

³⁷ c'hoar-gompez ar rouanez Tafaez, e wreg e-unan : c'hoar e wreg.

³⁸ gand e vugale : gand bugale Faraon.

34. Ne dennin ket ar rouantelez oll euz e zorn ; hogen e lezel a rin da rena e-pad an oll zeizioù euz e vuhez, en abeg da Zavid, va zervijer, pehini em-eus dilennet, pehini en-deus miret va gourhemennou ha va helennou.

35. Hogen tenna a rin ar rouantelez euz a zorn e vab, hag e roin dit deg breuriez anezi :

36. Ha d'e vab e roin eur vreuriez, evid ma chomo bepred eur hleuzeur da Zavid, va zervijer, dirazon e kêr Jeruzalem, em-eus dilennet, evid ma vije va ano eno.

37. Hogen te a gemerin, hag e reni war kement a hoantay da galon, hag e vezi roue war Izrael.

38. Mar selaouez eta kement ha ma hourhemennin dit, mar kerzez em heñchou, ha mar grez ar pezh a zo reiz dirazon, o viroud va gourhemennou ha va helennou, evel ma en-deus greet David, va zervijer, me a vezo ganez, hag e savin dit eun ti feal, evel ma em-eus savet ti David, hag e roin Izrael dit.

39. Ha me a hlaharo gouenn David diwar-benn kement-se ; hogen ne vezo ket da viken.

40. Salomon eta a fellas dezañ laza Jeroboam : hogen hemañ a zavas, hag a dehas en Ejipt etrezeg Sesak, roue an Ejipt ; hag eñ a chomas en Ejipt, ken na oe maro Salomon.

41. Lavariou all Salomon, hag e oberiou, hag e furnez, a zo skrivet oll e levr lavariou deizioù Salomon.

42. An deizioù e-pad pere ma renas Salomon e Jeruzalem war Izrael oll, a oe euz a zaou-ugent vloaz.

43. Ha Salomon a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet e kêr David, e dad, ha Roboam a renas en e leh.

XII. Pennad.

Deg breuriez a zilenn Jeroboam da roue.

1. Neuze Roboam a zeuas da Zichenn : rag eno e oa dastumet Izrael oll evid e lakaad da roue.

2. Hogen Jeroboam, mab Nabat, pehini a oa c'hoaz en Ejipt e peleh e oa tehet a-zirag roue Salomon, o veza klevet e oa maro, a zistroas euz an Ejipt.

3. Kaset e oe etrezeg ennañ evid e lakaad da zond : Jeroboam eta, hag oll dud Izrael a zeuas, hag a gomzas ouz Roboam, o lavaroud :

4. Da dad en-doa lakaet warnom eur yeo gwall-galed : hogen te bremañ skañva eun nebeud ar renadur ker kaled euz da dad, hag ar yeo ker pounner en-doa lakaet warnom, ha ni a zervijo ahanout.

5. Hag eñ a lavaras dezo : It e-pad tri devez, ha neuze distroit d'am havoud. Ha pa oe eet ar bobl kuit,

6. Ar roue Roboam a zalhas kuzul gand an henaoured a zave dirag Salomon e dad pa edo c'hoaz beo, hag a lavaras : Petra a guzult din da responta d'ar bobl³⁹-se ?

³⁹ bobl : tud ar bobl.

7. Hag i a lavaras dezañ : Mar sentez hirio ouz ar bobl-se, ha mar servijez anezi, ha mar grez ar pezh a houlennot, o komza outo gand habaskded, i a zervijo ahanout da viken.

8. Hogen eñ a zistaolas ar huzul o-doa roet dezañ an henaoured ; hag eñ a houlenas kuzul digand an dud yaouank pere a oa bet maget gantañ, hag a oa war e dro ;

9. Hag eñ a lavaras dezo : Pe guzul a roit-hu din, evid ma respontin d'an dud-se pere o-deus lavaret din : Skañva ar yeo en-deus lakaet da dad warnom ?

10. Hag an dud yaouank pere a oa bet maget gantañ a lavaras dezañ : Evel-henn e komzi ouz an dud-se pere o-deus komzet ouzit, o lavaroud : Da dad en-deus lakaet or yeo da veza pounner, skañva eñ deom, te. Evel-henn e komzi outo : Va biz bihan a zo tevoñ eged kein va zad.

11. Va zad, eme c'hwi⁴⁰, en-deus lakaet warnoh eur yeo pounner, ha me hel lakay c'hoaz da veza pounneroh : va zad en-deus skoet warnoh, gand skourjezou, ha me a skoy warnoh gand kraged.

12. Jeroboam eta, hag an oll bobl, a zeuas an trede deiz etrezeg Roboam, evel m'en-doa lavaret ar roue : Distroit d'am havoud an trede deiz.

13. Hag ar roue a respontas d'ar bobl gand garventez, hag o tilezel ar huzul o-doa roet dezañ an henaoured,

14. E komzas outo hervez kuzul ar re yaouank, o lavaroud : Va zad en-deus lakaet warnoh eur yeo pounner, ha me hel lakay c'hoaz da veza pounneroh : va zad en-deus skoet warnoh gand skourjezou, ha me a skoy warnoh gand kraged.

15. Hag ar roue ne falvezas ket dezañ ober ar pezh a houlenne ar bobl, o veza ma oa en em zistroet an Aotrou dioutañ, evid ma sevenje ar ger en-doa roet dre henou Ahias, ar Sidoniad, da Jeroboam, mab Nahat.

16. Pa welas ar bobl penaoz ne felle ket d'ar roue he selaoui, e leverjont dezañ : Pe lod on-eus-ni e David ? Na pe degouez e mab Isai ? Izrael, kee d'az teltou, ha te, David gwel bremañ da di. Hag Izrael a yeas d'e deltou.

17. Hogen Roboam a renas war ar vugale euz a Izrael pere a chome e kêriou Juda.

18. Ar roue Roboam a gasas eta Aduram pehini a oa war an tellou : hag Izrael oll a labezas anezañ, ken na oe maro. Hogen ar roue Roboam a bignas raktal war e garr, hag a dehas da Jeruzalem.

19. Hag Izrael en em zistagas euz a di David, bete-vremañ.

20. Pa glevas Izrael oll penaoz e oa distroet Jeroboam, e kasjont tud d'e hervel evid dond en o strollad, hag e lakejont anezañ da roue war Izrael oll ; hag hini anezo n'ez eas war heul David nemed breuriez Juda hepken.

21. Hogen Roboam o veza deuet da Jeruzalem, a zastumas oll di Juda ha breuriez Benjamin, nao-ugent mil den a vrezel, tud evid ar re wella, evid stourmi ouz ti Izrael, ha degas adarre ar rouantelez da Roboam, mab Salomon.

22. Hogen ger an Aotrou a yeas etrezeg Semeias, den Doue, o lavaroud :

23. Komz ouz Roboam, mab Salomon, roue Juda, hag ouz di Juda ha Benjamin, hag ouz ar re all euz ar bobl, o lavaroud :

24. Evel-henn e lavar an Aotrou : Ne bignot ket ha ne vrezelekaot ket a-eneb ho preudeur, bugale Izrael. Distroet pep hini d'e di ; rag me eo em-eus greet kement-se. I a zelaouas lavar an Aotrou, hag a zistroas euz a o hent, evel m'en-doa an Aotrou e hourhemennet dezo.

⁴⁰ eme c'hwi : emezoh.

25. Hogen Jeroboam a zavas Sichem war menez Efraim, hag a chomas enni : hag o veza eet er-mêz ahano, e savas Fanuel.

26. Ha Jeroboam a lavaras en e galon : : A-benn nemeur e tistroy ar rouantelez da di David.

27. Mar pign ar bobl-mañ evid ober sakrifisou e ti an Aotrou e Jeruzalem, kalon ar bobl-mañ a droy ouz he aotrou Roboam, roue Juda ; hag i a lazo ahanon hag a zistroy etrezeg eñ.

28. Ha goude beza greet e zoñj gantañ, e reas daou leue aour, hag e lavaras d'ar bobl : Na bignit mui da Jeruzalem : Izrael, setu da zoueed, pere o-deus da zaegaset euz a vro an Ejipt.

29. Hag eñ a lakaas unan e Betel, hag egile e Dan.

30. Ha kement-se a zeuas da behed ; rag ar bobl a yee beteg Dan evid azeuli al leue.

31. Ober a reas ivez templou war al lehiou uhel, ha beleien euz ar re zisterra euz ar bobl, pere ne oant ket euz a vibien Levi.

32. Lakaad a reas ivez eun deiz lid en eizved miz, er pemzegved deiz euz ar miz, e doare ar gouel braz a oa lidet e Juda. Hag eñ a bigne ouz an aoter, evel ma reas e Betel, evid ober sakrifisou d'al leueou en-doa greet : hag eñ a lakaas e Betel beleien evid al lehiou uhel en-doa savet.

33. D'ar pemzegved deiz euz an eizved miz, en-doa kavet en e galon e-unan⁴¹, e pignas ouz an aoter en-doa savet e Betel : hag eñ a reas eur gouel braz da vugale Izrael, hag eñ a bignas ouz an aoter evid devi ezañs.

XIII. Pennad.

Eur profed a ziougan da Jeroboam ganedigez Josias, ha diskar al lehiou uhel.

1. Ha setu eun den Doue a zeuas dre her an Aotrou da Vetel, pa edo Jeroboam en e zav ouz an aoter, ha ma taole an ezañs.

2. Hag eñ a harmas ouz an aoter dre her an Aotrou, hag a lavaras : Aoter, aoter, evel-henn e lavar an Aotrou ; setu e vezo ganet eur mab e ti David, a vezo anvet Josias, hag a lazo warnout beleien al lehiou uhel, pere a zev bremañ ezañs warnout, hag a zevo warnout eskern an dud.

3. Hag eñ a roas eun arouez en deiz-se, o lavaroud : Houmañ a vezo an arouez penaoz en-deus komzet an Aotrou : setu e fraillo an aoter, hag e vezo feltret al ludu a zo warnezi.

4. Pa glevas ar roue ar geriou en-doa garmet an den Doue ouz an aoter a oa e Betel, eh astennas e zorn euz an aoter, o lavaroud : Krogit ennañ. Hag an dorn en-doa astennet outañ a zehas ; ha ne hellas mui e denna etrezeg ennañ.

5. An aoter ivez a fraillas, hag al ludu a oa warnezi a oe feltret hervez an arouez en-doa roet an den Doue dre her an Aotrou.

6. Hag ar roue a lavaras d'an den Doue : En em erbed dirag an Aotrou, da Zoue, ha ped evidon, evid ma tistroio va dorn en-dro. Hag an den Doue a bedas dirag an Aotrou, ha dorn ar roue a zistroas dezañ, hag a zeuas evel kent.

7. Hag ar roue a lavaras d'an den Doue : Deus da leina ganen em zi, ha me a roio dit traou kaer.

⁴¹ en-doa kavet en e galon e-unan : en-doa dibabet e-unan.

8. Hag an den Doue a lavaras d'ar roue : Ha pa rofes din an hanter euz da di, n'ez ajen ket ganez, ha ne zebrjen ket a vara, ha ne evjen ket a zour el leh-mañ :

9. Hag evel-henn eo bet gourhemennet din gand ger an Aotrou, o lavaroud : Ne zebri ket a vara, ha ne evi ket a zour, ha ne zistroi ket dre an hent ma out deuet.

10. Mond a reas eta kuit dre eun hent all, ha ne zistroas ket dre an hent ma oa deuet da Vetel.

11. Hogen bez' e oa eur profed koz hag a chome e Betel ; hag e vibien a zeuas, hag a lavaras dezañ kement en-doa greet an den Doue en deiz-se e Betel ; hag i a zanevellas ivez d'o zad ar geriou en-doa lavaret d'ar roue.

12. Hag o zad a lavaras dezo : Dre e hent eo-eñ eet ? Hag e vibien a ziskouezas dezañ dre be hent e oa eet kuit an den Doue a oa deuet euz a Juda.

13. Hag eñ a lavaras d'e vibien : Likit eun dibr war eun azen din. Ha pa oe dibret ganto, e pignas warnezañ.

14. Hag ez eas war-lerh an den Doue, hag e kavas anezañ azezet dindan eun terebint : hag eñ a lavaras dezañ : Ha te eo an den Doue a zo deuet euz a Juda ? Hag eñ a lavaras : Me eo.

15. Hag eñ a lavaras dezañ : Deus ganen d'am zi evid debri bara.

16. Hag eñ a lavaras : Ne hellan ket distrei, na mond ganez, na debri, nag eva dour el leh-mañ :

17. Hag an Aotrou en-deus komzet ouzin dre her an Aotrou, o lavaroud : Ne zebri ket a vara, ha ne evi ket a zour eno, ha ne zistroi ket dre an hent ma vezi eet.

18. Hag hemañ a lavaras dezañ : Profed on ivez eveldout ; hag eun êl en-deus komzet ouzin dre her an Aotrou, o lavaroud : Degas eñ ganez en da di, evid ma tebro bara, ha ma evo dour. Hag hemañ a douellas anezañ,

19. Hag e gasas gantañ : hag eñ a zebras bara, hag a evas dour en e di.

20. Ha pa oent azezet oh taol, ger an Aotrou a zeuas etrezeg ar profed en-doa e lakaet da zistrei.

21. Hag eñ a harmas ouz an den Doue a oa deuet euz a Juda, o lavaroud : Setu petra a lavar an Aotrou : O veza n'eh-eus ket sentet ouz ger an Aotrou, ha n'eh-eus ket miret ar gourhemennou en-doa greet dit an Aotrou, da Zoue,

22. Ha ma out distroet, ha ma eh-eus debret bara, ha ma eh-eus evet dour, el leh e pehini en-doa an Aotrou lavaret dit na zebrjes bara, ha na evjes dour, ne vezo ket douget da gorr maro e bez da dadou.

23. Ha pa en-doe hemañ debret hag evet, ar profed en-doa e zegaset a zebras e azen dezañ.

24. Ha pa'z ee hemañ kuit, eul leon en em gavas gantañ en hent, hag a lazas anezañ, hag e gorr maro a chomas gourvezet en hent : hogen an azen a oa chomet en e gichenn, hag al leon a oa chomet e-kichenn e gorr maro.

25. Ha setu tud a yee e-biou, a welas ar horv maro gourvezet en hent, hag al leon pehini a oa chomet e-tal ar horv maro. Hag i a zeuas hag a lavaras kement-se er gêr e pehini e chome ar profed koz-se.

26. Pa glevas ar profed pehini en-doa e lakaet da zistrei euz e hent, e lavaras : An den Doue eo pehini a zo bet dizent da her an Aotrou ; hag an Aotrou en-deus her roet d'al leon, pehini en-deus e zraillet, hag e lazet, hervez ar ger en-doa roet an Aotrou dezañ.

27. Hag eñ a lavaras d'e vibien : Likit eun dibr war an azen din. Ha pa oe dibret ganto,

28. Ez eas-eñ, hag e kavas e gorv maro gourvezet en hent, hag an azen hag al leon 'oa chomet en e gichenn. Al leon ne zebras ket ar horv maro, ha ne reas droug ebed d'an azen.

29. Hag ar profed a gemeras korv maro an den Doue, hag a lakaas anezañ war an azen, hag a zougas anezañ d'ar gêr e pehini e chome, evid ober e gañv.

30. Hag eñ a lakaas e gorv maro en e vez e-unan : hag i a reas e gañv, o lavaroud : Allaz, allaz, va breur !

31. Ha p'o-doe greet e gañv, e lavaras-eñ d'e vibien : Pa vezin maro, e veziot ahnaon er bez e peleh eo beziet an den Doue : likit va eskern ouz e eskern.

32. Rag ar pezh en-deus diouganet diou lavar an Aotrou, a-eneb an aoter a zo e Betel, hag a-eneb an oll demplou euz al lehiou uhel a zo e kêriou Samari, a hoarvezo heb arvar.

33. Goude kement-se ne zistroas ket Jeroboam diou e wall-vuhez ; hogen en eneb e lakaas da veleien el lehiou uhel euz ar re zisterra euz ar bobl. Piou bennag a felle dezañ, a leunie e zorn, hag a zeue da veleg el lehiou uhel.

34. Ha dre ze e pehas ti Jeroboam, hag e oe diskaret ha lamet diwar-horre an douar.

XIV. Pennad.

Maro Jeroboam.

1. En amzer-ze Abia, mab Jeroboam, a zeuas da veza klañv.

2. Ha Jeroboam a lavaras d'e wreg : Sao, ha laka dillad all, evid na vezo ket gouezet penaoz out gwreg da Jeroboam : ha kee da Zilon e peleh ema ar profed Ahias, pehini en-deus lavaret din e renjen war ar bobl-mañ.

3. Ha kemer en da zorn deg bara, hag eur wastell, hag eur pod mel⁴², ha kee d'e gavoud : rag eñ a roy da anaoud dit petra a dle da hoarvezoud gand ar bugel-ze.

4. Gwreg Jeroboam a reas evel m'en-doa lavaret-eñ : hag hi a zavas hag a yeas da Zilo, hag a zeuas da di Ahias. Hogen eñ ne helle ket gweloud, o veza ma oa teñvallaet e zaoulagad an abeg d'e gozni.

5. Hogen an Aotrou a lavaras da Ahias : Setu gwreg Jeroboam a zeu evid goulenn kuzul diganez diwar-benn he mab a zo klañv : evel-henn hag evel-henn e liviri dezi. Pa zeue eta houmañ en ti, ha ma kuze piou e oa,

6. Ahias a glevas an trouz euz he zreid, pa dreuzas-hi an nor, hag e lavaras : Deus e-barz, gwreg Jeroboam ; perag e fell dit kuza piou out ? Hogen me a zo bet kaset evid disklêria dit eur gwall gelou.

7. Kee, ha lavar da Jeroboam : Evel-henn e lavar an Aotrou, Doue Izrael : Petra bennag ma em-eus da zavet euz a-douez ar bobl, ha ma em-eus da lakaet da rena war va fobl Izrael :

8. Ma em-eus rannet rouantelez ti David, hag he roet dit ; ha n'out ket bet evel David, va zervijer, pehini en-deus miret va helennou, en-deus va heuliet a-greiz e galon, oh ober ar pezh a oa mad dirazon ;

⁴² eur pod mel : eur podad mel.

9. O veza ma eh-eus greet droug dreist ar re oll a zo bet en da raog ; ha ma eh-eus greet evidout doueed a-ziavêz ha taolet e teuz⁴³, evid va lakaad ad vond droug ennon ; ha me eh-esu va zaolet a-dreñv da gein :

10. Rag-se e kasin gloaz war ti Jeroboam, hag e skoin e ti Jeroboam beteg al loened, beteg an hini a zalhed kloz⁴⁴, hag an disterra euz a Izrael : ha me a garzo ar re all euz a di Jeroboam, evel ma karzer an teil beteg an tamm diweza.

11. Ar re euz a di Jeroboam a varvo e kêr, a vezo debret gand ar chas ; hag ar re a varvo war ar mêz a vezo dispennet gand evned an neñv : rag an Aotrou en-deus e lavaret.

12. Hogen te, sav ha kee d'az ti : ha pa'z ay da dreid e kêr, e varvo ar bugel :

13. Hag Izrael oll a ouelo warnezañ, hag a vezio anezañ : rag ne vezo nemed henez euz a di Jeroboam a vezo lakaet er bez ; rag an Aotrou, Doue Izrael, en-deus sellet a-druez outañ e Jeruzalem.

14. Hogen an Aotrou en-deus lakaet dezañ eur roue war Izrael, pehini a skoy gand ti Jeroboam en deiz-mañ, hag en amzer-mañ :

15. Hag an Aotrou Doue a skoy gand Izrael, evel ma eo hejet ar gorzenn gand an dour : hag eñ a ziframmo Izrael euz an douar mad-se en-deus roet d'o zadou, hag a skigno anezo en tu all d'ar ster ; o veza ma o-deus greet evito koajou sakr⁴⁵, evid lakaad an Aotrou da vond droug ennañ en o eneb.

16. Hag an Aotrou a roy Izrael e preiz, en abeg da behejou Jeroboam, pehini en-deus pehet, ha lakaet Izrael da behi.

17. Gwreg Jeroboam eta a zavas, a yeas kuit, hag a zeuas da Dersa : ha pa lakaas-hi he zreid war dreuzou an ti, e varvas ar bugel.

18. Hag hi a vezias anezañ. Hag Izrael oll a ouelas dezañ hervez m'en-doa lavaret an Aotrou dre henou Abias, ar profed, e zervijer.

19. Oberiou all Jeroboam, penaoz e stourmas, ha penaoz e renas, a zo skrivet el levr an oberiou⁴⁶ a beb bloaz euz a roueed Izrael.

20. Hogen an deizioù ma renas Jeroboam, a oe euz a zaou vloaz warn-ugent : hag eñ a gouskas gand e dadou⁴⁷ ; ha Nadab, e vab, a renas en e leh.

21. Hogen Roboam, mab Salomon, a renas e Juda. Eur bloaz ha daou-ugent en-doa pa zeuas da reni ; ha seiteg vloaz e renas e kêr Jeruzalem, oll vreuriezoù Izrael evid lakaad e ano. E vamm a oa anvet Naama, an Ammonitez.

22. Ha Juda a reas ivez an droug dirag an Aotrou ; hag i a lakaas anezañ da vond droug ennañ dre o fehejou, muioh eged n'o-doa greet o zadou dre o oll dorfejou.

23. Rag i a zavas ivez evito aoteriou, ha skeudennou, ha koajou-sakr war bep krehenn uhel, ha dindan peb gwezenn vodeg.

24. Hogen bez' e oe Sodomidi⁴⁸ er vro, pere a reas an oll fallagriezou o-doa greet ar poblou-ze en-doa kaset an Aotrou da get dirag bugale Izrael.

25. Er pempved bloaz euz a ren Roboam, Serak, roue an Ejipt, a bignas da Jeruzalem.

26. Hag eñ a skrapas teñzorioù ti an Aotrou, ha teñzorioù ti ar roue, hag a wastas oll ; hag ivez an tirennou aour en-doa greet Salomon.

⁴³ taolet e teuz : skeudennou en arem.

⁴⁴ an hini a zalhed kloz : ar sklav.

⁴⁵ koajou sakr : idolou.

⁴⁶ el levr an oberiou : e levr an oberiou.

⁴⁷ hag eñ a gouskas gand e dadou : a varvas hag a oe beziet e bez e dadou.

⁴⁸ Sodomidi : paotred Sodom, "gisti" anezo.

27. Ar roue Roboam a reas tirennou arem en o leh, hag a lakaas anezo etre daouarn ar re a vire an tirennou, hag ar re a evesae ouz dor ti ar roue.

28. Ha pa'z ee ar roue e ti an Aotrou, ar re o-doa ar garg da vond en e raog a zouge anezo ; ha goude-ze e tougent anezo el leh ma oa miret an armou.

29. Oberiou all Roboam, ha kement en-deus greet, a zo skrivet el levr an oberiou a beb bloaz euz a roueed Juda.

30. Ha brezel a oe bepred etre Roboam ha Jeroboam.

31. Ha Roboam a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet ganto e kêr David : e vamm a oa anvet Naama an Ammonitez : hag Abiam, e vab, a renas en e leh.

XV. Pennad.

Abiam a zo ker fallagr hag e dad. Asa e vab a zo deol evel David.

1. En triwehved bloaz euz a ren Jeroboam, mab Nabat, e renas Abiam war Juda.

2. Tri bloaz e renas e Jeruzalem : e vamm a oa anvet Maac'ha, hag a oa merh da Abesalom.

3. Hag eñ a gerzas en oll behejou en-doa greet e dad en e raog : hag e galon ne oa ket klok gand an Aotrou, e Zoue, evel kalon David e dad.

4. Hogen en abeg da Zavid e roas an Aotrou, e Zoue, dezañ eur hleuzeur e Jeruzalem, o sevel e vab war e lerh, hag o starda Jeruzalem.

5. O veza m'en-doa David greet reiz dirag an Aotrou, ha ne oa ket en em zistroet e oll zeziou e vuhez euz a gement en-doa gourhemennet dezañ, nemed er pez en-doa greet e-keñver Urias, an Helead.

6. Brezel a oe koulskoude etre Roboam ha Jeroboam, keit ha ma vevas.

7. Oberiou all Abiam, ha kement en-deus greet, ha n'int ket bet skrivet el levr an oberiou a beb bloaz euz a roueed Juda ? Ha brezel a oe etre Abiam ha Jeroboam.

8. Hag Abiam a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet e kêr David : hag Asa, e vab, a renas en e leh.

9. En ugentved bloaz euz a Jeroboam, roue Izrael, e renas Asa, roue Juda :

10. Hag eñ a renas eur bloaz ha daou-ugent e Jeruzalem. E vamm-goz a oa anvet Maac'ha, hag a oa merh da Abesalom.

11. Hag Asa a reas ar pez a oa reiz dirag an Aotrou, evel David e dad.

12. Kas a reas er-mêz euz ar vro ar Sodomidi, hag e skarzas oll idolou loudour o-doa greet e dadou.

13. Lemel a reas ivez a garg Maac'ha e vamm, evid na vije mui da briñsez war geelidigez Priap⁴⁹, ha war ar hoad he-doa gouestlet dezañ : diskara a reas e geol⁵⁰, hag e torras e skeudenn vezuz, hag e tevas anezi e-tal froud Sedron :

14. Koulskoude ne freuzas ket al lehiou uhel : hogen kalon Asa a oa klok gand an Aotrou e-pad e oll zeziou.

15. Kas a reas ivez e ti an Aotrou ar pez en-doa e dad gouestlet ha mennet da rei, an arhant, an aour, hag al listri.

16. Hogen brezel a oa etre Asa ha Baasa, roue Izrael, keit ha ma vevjont.

⁴⁹ war geelidigez Priap : ?

⁵⁰ diskara a reas e geol : ?

17. Baasa, roue Izrael, a bignas ivez e Juda, hag a zavas Rama, evid na hellje hini na mond na dond etrezeg Asa, roue Juda.

18. Neuze Asa o kemeroud an oll arhant hag an aour a oa chomet e teñzoriou ti an Aotrou, hag e teñzoriou ti ar roue, o lakaas etre daouarn e zervijerien ; hag eñ o hasas da Venadad, mab Tabremon, mab Heziou, roue Siria, pehini a chome e Damas, o lavaroud :

19. Kevredigez 'zo etre me ha te, evel ma ez eus bet etre va zad ha da dad. Rag se em-eus kaset dit traou kaer, arhant hag aour : ha me az ped da zond, ha da derri ar gevredigez ez-poa gand Baasa, roue Izrael, evid ma pella diouzin.

20. Benadad o rei e hrad vad da houlenn ar roue Asa, a gasas priñsed e arme a-eneb kêriou Izrael, hag i a stourmas ouz Ahion, ha Dan, hag Abet-Maac'ha, hag oll Gennerot, da lavared eo, oll vro Neftali.

21. Pa glevas Baasa kement-se, eh ehanas da zevel Rama, hag e tistroas da Dersa.

22. Neuze ar roue Asa a gasas kannaded dre oll vro Juda, evid lavaroud : Na vezet digarezet hini : hag i a gemeras ar vein euz a Rama, hag ar hoad, gand pere e save Baasa kêr, hag ar roue Asa a zavas ganto Gabaa-Benjamin ha Masfa.

23. Oberiou all Asa, hag e oll oberiou kaer, ha kement en-deus greet, hag ar hêriou en-deus savet, ha n'int ket bet skrivet el levr an oberiou a beb bloaz euz a roueed Juda ? Koulskoude e amzer e gozni en-doe poan en e dreid.

24. Hag eñ a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet ganto e kêr David e dad. Ha Josafat, e vab, a renas en e leh.

25. Hogen Nadab, mab Jeroboam, a zeuas da rena war Izrael en eil bloaz euz a Asa, roue Juda : hag eñ a renas war Izrael daou vloaz.

26. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, hag a gerzas e heñchou e dad, hag er pehejou a lakaas Izrael da ober.

27. Higen Baasa, mab Ahias, euz a di Issakar, a aozas spiou dezañ, hag a skoas gantañ war harz Gebbeton, a zo eur gêr d'ar Finistined : rag Nadab hag Izrael oll a hronne neuze Gebbeton.

28. Baasa a lazas eta Nadab en trede bloaz euz a Asa, roue Juda, hag a renas en e leh.

29. Ha pa renas-eñ, e skoas gand oll di Jeroboam. Ne lezas hini ebed euz e ouenn heb e zispenna, hervez ar ger en-doa lavaret an Aotrou dre henou Ahias, ar Silonit, e zervijer.

30. En abeg da behejou Jeroboam, en-doa greet, hag en-doa lakaet da ober da Izrael, hag en abeg d'ar pehed gand pehini en-doa lakaet droug da zevel en Aotrou, Doue Izrael.

31. Oberiou all Nadab, ha kement en-deus greet, ha n'int ket bet skrivet el levr an oberiou a beb bloaz euz a roueed Izrael ?

32. Ha brezel a oa etre Asa ha Baasa, roue Izrael, keit ha ma vevjont.

33. An trede bloaz euz a Asa, roue Juda, Baasa, mab Ahias, a renas war Izrael oll e Tersa , hag eñ a renas pevar bloaz warn-ugent.

34. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, hag a gerzas en heñchou Jeroboam, hag en e behejou, hag ar pehejou a lakaas Izrael da ober.

XVI. Pennad.

Jehu a ziougan da Vaasa diskar e di hag e ouenn.

1. Hogen ger an Aotrou a gomzas ouz Jehu, mab Hanani, a-eneb Baasa, o lavaroud :

2. O veza ma em-eus da zavet euz ar poultr, ha ma em-eus da lakaet da benn war va fobl Izrael, ha ma eh-eus kerzet koulskoude e hent Jeroboam, o lakaad va fobl Izrael da behi, evid va heskina gand o fehejou,

3. Setu e lamin diwar an douar nested Baasa, ha nested e di : ha me a lakay da di evel ti Jeroboam, mab Nabat.

4. Neb a varvo e kêr euz a ouenn Baasa, a vezo debret gand ar chas, ha neb a varvo war ar mêz a vezo debret gand evned an neñv.

5. Oberiou all Baasa, ha kement en-deus greet, hag e stourmou, ha n'int ket bet skrivet el levr an oberiou a beb bloaz euz a roueed Izrael ?

6. Ha Baasa a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet e Tersa : hag Ela e vab a renas en e leh.

7. Hogen pa oe roet da anaoud da Vaasa dre henou Jehu, mab Hanani, ar profed, ger an Aotrou en e eneb hag eneb e di, en abeg d'an oll droug en-doa greet dirag an Aotrou evid e heskina gand oberiou e zaouarn, penaoz e teuje evel ti Jeroboam ; rag se e lazas anezañ, da lavaroud eo, Jehu, mab Hanani, ar profed.

8. Er c'hwehved bloaz warn-ugent eta euz a Asa, roue Juda, e renas Ela, mab Baasa, war Izrael e Tersa : hag eñ a renas daou vloaz.

9. Ha Zambri, e zervijer, dug an hanter euz e varheien, en em zavas en e eneb, e-pad ma eve Ela e Tersa, ha ma oa mezo e ti Arsa, merer Tersa.

10. Zambri eta oh en em deurel warnezañ, a skoas gantañ hag e lazas, er seizved bloaz warn-ugent euz a Asa, roue Juda, hag a renas en e leh.

11. Ha pa renas, ha pa oe azezet war e dron, e skoas gand oll di Baasa, ha ne lezas hini anezo, na kerent na mignoned.

12. Zambri eta a gasas da get oll di Baasa, hervez ar ger en-doa lavaret an Aotrou da Vaasa dre henou Jehu, ar profed,

13. En abeg da oll behejou Baasa, ha da behejou Ela, e vab, pere o-doa pehet, ha lakaet Izrael da behi, oh heskina an Aotrou, Doue Izrael, gand o fougou.

14. Oberiou all Ela, ha kement en-deus greet, ha n'int ket bet skrivet el levr an oberiou a beb bloaz euz a roueed Izrael ?

15. Er seizved bloaz warn-ugent euz a Asa, roue Juda, Zambri a zeuas e Tersa e-pad seiz devez : hogen an arme a hronne Gebbeton, kêr d'ar Filistined.

16. Pa glevas Izrael penaoz e oa en em zispahet Zambri, ha penaoz en-doa lazaret ar roue, e lakejont oll da roue dezo Amri, pehini a oa en amzer-ze priñs arme Izrael er hamp.

17. Hag Amri a bignas euz a Hebbeton, hag Izrael oll gantañ ; hag i a hronnas Tersa.

18. Pa welas Zambri penaoz e oa dare kêr da veza stourmet, ez eas e-barz ar palez, hag eñ en em zegas gand ti ar roue, hag a varvas,

19. Er behejou en-doa greet oh ober an droug dirag an Aotrou, hag o kerzoud e hent Jeruzalem, hag ar pehed en-doa greet o lakaad Izrael da behi.

20. Oberiou all Zambri, hag e zispah, hag e waskerez, ha n'int ket bet skrivet el levr an oberiou a beb bloaz euz a roueed Izrael ?

21. Neuze pobl Izrael en em rannas war zaouhanter ; an hanter euz ar bobl a heulias Tebni, mab Ginet, evid e lakaad da roue ; hag an hanter all a heulias Amri.

22. Hogen ar bobl a oa gand Amri a oe treh d'ar bobl a oa war heul Tebni, mab Ginet : ha pa oe maro Tebni, e renas Amri e-unan.

23. Er bloaz unan ha tregont euz a Asa, roue Juda, e renas Amri war Izrael ; hag eñ a renas daouzeg vloaz : e Tera e renas c’hweh vloaz.

24. Hag eñ a brenas menez Samari digand Somer evid daou dalant arhant : hag eñ a zavas eno eur gêr a halvas Samari, dioh ano Somer, perhenn ar menez.

25. Hogen Amri a reas an droug dirag an Aotrou ; ha gwasoh e reas eged ar re oll a oa bet en e raog.

26. Hag eñ a gerzas e oll hent Jeroboam, mab Nabat, hag er pehejou en-doa greet o lakaad Izrael da behi oh heskina an Aotrou gand e fougeou.

27. Oberiou all Amri, hag ar stourmou en-deus greet, ha n’int ket bet skrivet el levr an oberiou a beb bloaz euz a roueed Izrael ?

28. Hag Amri a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet e Samari ; hag Ac’hab e vab a renas en e leh.

29. Ac’hab, mab Amri, a renas war Izrael en ezived bloaz ha tregont euz a Asa, roue Juda : hag Ac’hab, mab Amri, a renas war Izrael e Samari e-pad daou vloaz warn-ugent.

30. Hag Ac’hab, mab Amri, a reas an droug dirag an Aotrou, gwasoh eged ar re oll a oa bet en e raog.

31. Ne oa ket a-walh gantañ kerzoud e pehejou Jeroboam, mab Nabat : kemeroud a reas ohpenn da wreg Jezabel, merh Etbaal, roue ar Sidonied : mond a reas ivez hag e servijas Baal⁵¹, hag eh azeulas anezañ.

32. Hag eñ a lakaas aoter Baal e templ Baal, en-doa savet e Samari :

33. Hag eñ a blantas eur hoad sakr⁵² : hag Ac’hab a yeas muih-vui en e behed, hag a heskinas an Aotrou, Doue Izrael, dreist an oll roueed a Izrael a oa bet en e raog.

34. En e amzer, Hiel euz a Vetel a zavas Jeriko : war Abiram e genta-ganet e taolas an diazez anezi⁵³, e lakaas, ha war Zegub, e vab yaouanka, e lakaas he doriou, hervez ger an Aotrou, en-doa lavaret dre henou Jozue, mab Nun.

XVII. Pennad.

Elias a zo maget gand ar brini. Mab eun intañvez a zistro a varo da veo.

1. Hag Elias an Tesbiad, unan euz ar re a chome e Galaad, a lavaras da Ac’hab : Evel ma eo beo an Aotrou, Doue Izrael, dirag pehini emaon em zav, ne vezo na gliz na glao er bloaziou-mañ, nemed dioh lavar va genou.

2. Ha ger an Aotrou a gomzas outañ, o lavaroud :

3. Kee ahann, ha tro war-zu ar sav-heol, hag en em guz e-harz Karit, pehini a zo e-keñver ar Jourdan.

4. Hag eno eh evi euz ar froud ; ha me em-eus gourhemennet d’ar brini d’az poueta eno.

5. Mond a reas eta, hag e reas hervez ger an Aotrou : ha pa oe eet kuit, e chomas e-tal froud Karit, pehini a zo e-keñver ar Jourdan.

6. Ar brini a zegase dezañ bara ha kig dioh ar mintin hag ivez bara ha kig dioh ar pardaez ; hag eñ a eve euz ar froud.

⁵¹ mond a reas ivez hag e servijas Baal : mond a reas da zervija Baal.

⁵² eur hoad sakr : eun idol.

⁵³ e taolas an diazez anezi : diwar Abiram e taolas ...

7. Hogen a-benn eun nebeud devziou e tizehas ar froud ; rag na oa ket kouezet a hlao war an douar.

8. Neuze ger an Aotrou a gomzas outañ, o lavaroud :

9. Sao, ha kee da Zarefta ar Sidonied, hag e chomi eno : rag gourhemennet em-eus da eur wreg intañvez d'az poueta eno.

10. Sevel a reas, hag ez eas da Zarefta. Ha pa oe deuet da borz kêr, e welas eur wreg intañvez pehini a zastume keuneud ; hag eñ he galvas, hag a lavaras dezi : Ro din eur banne dour en eur pod, ma evin.

11. Ha pa'z ee-hi evid e gerhoud, e harmas-eñ a-dreñv he hein, o lavaroud : Degas ivez din, me az ped, eur genaouad bara en da zorn.

12. Hag hi a lavaras : Evel ma eo beo an Aotrou, da Zoue, n'em-eus ket a vara, hogen hepken eur vozad bleud en eur pod, hag eur banne eoul en eul lestrig : setu e tastuman daou damm keuneud, evid mond e-barz⁵⁴, hag e aoza evidon hag evid va mab, evid ma tebrim ha ma varvim.

13. Hag Elias a lavaras dezi : N'az pet ket a aon ; hogen kee, ha gra evel ma eh-eus lavaret. Koulskoude gra din da genta gand ar bleud-se eur bara bihan poazet dindan al ludu, ha degas eñ din : ha goude e ri evidout hag evid da vab.

14. Hag evel-henn e lavar an Aotrou, Doue Izrael : Ar bleud a zo er pod ne ziuouero ket, hag an eoul a zo el lestrig ne vihannay ket, ken na vezo deuet an deiz e pehini e tle an Aotrou rei dour war-horre an douar.

15. Hag hi a yeas, hag a reas hervez ger Elias : hag eñ a zebras, hag hi ivez, hag he oll di : hag abaoe an deiz-se,

16. Ar pod bleud ne ziuoueras ket, hag al lestrig eoul ne vihannas ket, hervez ar ger en-doa lavaret an Aotrou, dre henou Elias.

17. Goude ze e c'hoarzvezas penaoz e kouezas klañv mab gwreg an ti-ze ; hag e gleñved a oa ker kreñv, na chomas c'hwezadenn ebed ennañ.

18. Hag hi a lavaras da Elias : Petra a zo etre te ha me, den Doue ? Ha deuet out-te etrezeg ennon evid degas da goun din va fallagriezou, hag evid laza va mab ?

19. Hag Elias a lavaras dezi : Ro din da vab. Hag eñ a gemeras anezañ euz he divreh-hi, hag e zougas er gambr e pehini e chome, hag a lakaas anezañ war e wele e-unan.

20. Hag eñ a harmas ouz an Aotrou, hag a lavaras : Aotrou, va Doue, ha glaharet eh-eus-te ivez an intañvez e ti pehini on bouetet gwella ma hell, beteg laza he mab ?

21. Hag eñ en em astennas, hag en em geidas⁵⁵ teir gwech war ar bugel, hag a harmas etrezeg an Aotrou, hag a lavaras : Aotrou, va Doue, ra zistroy, me az ped, ene ar bugel-ze en e greiz.

22. Hag an Aotrou a zelaouas ouz mouez Elias : hag ene ar bugel a zsitroas en e greiz, hag e tistroas a varo da veo.

23. Hag Elias a gemeras ar bugel, hag a zegasas anezañ euz e gambr da oueled an ti, hag e roas d'e vamm : hag eñ a lavaras dezi : Setu eo beo da vab.

24. Hag ar wreg a lavaras da Elias : Bremañ eh anavezan diogh kement-se penaoz out eun den Doue, ha penaoz ger an Aotrou a zo gwir en da henou.

⁵⁴ evid mond e-barz : e-barz va zi.

⁵⁵ en em geidas : en em ledas.

XVIII. Pennad.

An Aotrou a gas Elias etrezeg Ac'hab. Lakaad a ra ar glao da goueza.

1. Goude meur a zeiz e teuas ger an Aotrou da Elias en trede bloaz, o lavaroud : Kee, hag en em ziskouez da Ac'hab, evid ma roin glao war-horre an douar.

2. Elias a yeas eta d'en em ziskoueza da Ac'hab : hogen direiz⁵⁶ e oa an naonegez e Samari.

3. Hag Ac'hab a halvas Abdias, merer e di : hogen Abdias a zouje kalz an Aotrou.

4. Rag pa lakaas Jezabel da laza profeded an Aotrou, e kemeras-eñ kant profed, hag e kuzas anezo e keviou, hanter-kant en unan, hanter-kant en eun all, hag eñ o magas gand bara ha dour.

5. Ac'hab eta a lavaras da Abdias : Kee dre ar vro war harz an oll feunteuniou, hag en oll draoniennou, marteze e hellim kavoud geot, evid savetei ar hezeg hag ar vuled, ha na varvo ket an oll loened.

6. Hag i a rannas ar vro etrezo, evidd ober an dro dezi ; Ac'hab o veza e anavezet, en em daolas war e henou hag a lavaras : Ha n'eo ket te, Elias, va aotrou ?

7. Ha pa edo Abdias en hent, Elias a zigouezas gantañ, hag Abdias o veza e anavezet, en em daolas war e henou hag a lavaras : Ha n'eo ket te, Elias, va aotrou ?

8. Hag Abdias a lavaras : Me eo. Kee, ha lavar d'az aotrou : Setu Elias.

9. Hag Abdias a lavaras : Pe behed em-eus-me greet, evid ma lakafes ahanon, me da zervijer, etre daouarn Ac'hab, evid ma lazo ahanon ?

10. Evel ma eo beo an Aotrou, n'eus na broad na rouantelez e pehini n'en-deus kaset va aotrou evid da gerhoud : ha pa lavarent oll : N'ema ket amañ ; en-deus greet kemenn d'an oll rouanteleziou ha d'an oll vroadou, o veza na gaved ket ahanout.

11. Ha bremañ e levez din : Kee, ha lavar d'az aotrou : Setu Elias.

12. Ha pa vezin eet diouzit, sepred an Aotrou az tougo en eul leh ha na ouzon ket ; ha pa'z in da lavaroud kement-se da Ac'hab, ha ma ne gav ket ahanout, e lazo ahanon : hogen da zervijer a zouj an Aotrou a-vihanig.

13. Ha n'eo ket bet roet da anaoud dit, va aotrou, petra em-eus greet pa lasas Jezabel profeded an Aotrou, penaoz e kuzis kant euz profeded an Aotrou e keviou, hanter-kant en unan, hanter-kant en eun all, hag e vagis anezo gand bara ha dour ?

14. Ha bremañ e levez : kee, ha lavar d'az aotrou : Setu Elias ; evid ma lazo ahanon.

15. Hag Elias a lavaras : Evel ma eo beo Aotrou an armeou, dirag pehini emeon, en em ziskouezin hirio dezañ.

16. Abdias a yeas eta da gaoud Ac'hab, hag a zanevellas dezañ : hag Ac'hab a yeas war arbenn Elias.

17. Ha pa welas anezañ, e lavaras dezañ : Ha n'eo ket te eo a geflusk Izrael ?

18. Hag Elias a lavaras : N'eo ket me eo em-eus keflusket Izrael : hogen te ha ti da dad, c'hwi pere hoh-eus dilezet gourhemennou an Aotrou, hag hoh-eus heuliet Baal.

⁵⁶ direiz : braz-kenañ.

19. Koulskoude kas tud bremañ, ha stroll Izrael oll war menez ar Harmel, hag ar pevar-hant hanter-kant profed Baal hag ar pevar-hant profed euz ar hoajou sakr, pere a zebr euz a daol Jezabel.

20. Ac'hab eta a gasas tud etrezeg oll vugale Izrael, hag a zastumas ar brofeded war menez ar Harmel.

21. Hag Elias o tostaad ouz an oll bobl, a lavaras : Beteg pegeid e viot-hu kamm en daou du ? Mar deo Doue an Aotrou, heulit-eñ ; hogen mar deo doue Baal, heulit-eñ. Hag ar bobl ne lavaras ger.

22. Hag Elias a lavaras c'hoaz d'ar bobl : Euz a brofeded an Aotrou n'eus chomet nemedon : hogen euz a brofeded Baal ez eus pevar-hant hanter-kant den.

23. Ra vezo roet deom daou ejenn ; ra zilennint evito unan euz an ejenned, ha goude ma o-devezo e drohet a-dammou, ra lakaint anezañ war ar heuneud ; heb lakaad tan dindan : ha me a gemero an ejenn all hag a lakay anezañ war ar heuneud, heb lakaad tan dindan.

24. Galvit anoïou ho toueeou, ha me a halvo ano va Aotrou : hag an Doue a zelaouo dre an tan, ra vezo eñ Doue⁵⁷. Hag an oll bobl a respontas hag a lavaras : Kinnig mad.

25. Hag Elias a lavaras da brofeded Baal : Dilennit eun ejenn evidoh, hag aozit eñ da genta, o veza ma oh kalz : ha galvit anoïou ho toueed, heb lakaad tan dindan.

26. Hag i o veza kemeret an ejenn a oa bet roet dezo, a aozas anezañ : hag i a halvas ano Baal adaleg ar mintin beteg kreisteiz, o lavaroud : Baal, selaou ouzom. Hogen ne oa mouez ebed a gement a responte : hag i a lamme war an aoter o-doa greet.

27. Ha pa oa deuet kreisteiz, Elias a reas goap anezo, o lavaroud : Garmit kreñvoh ; rag doue eo, ha marteze e komz, pe ema en eun ostaleri, pe en hent, pe evid gwir e kousk, hag eo red e zihuna.

28. Hag i a harmas gand eur vouez kreñv, hag a reas trohou enno o-unan hervez o hiz gand kontilli ha gand kontilligou, ken na skuille ar gwad warnezo.

29. Hogen pa oe tremenet kreisteiz, endra ma edont o tiougani, ha ma oa deuet an amzer e pehini e tleed kinniga ar sakrifis, ha na gleved na mouez, na den ebed o responta, nag o selaoui ouz o fedennou,

30. Elias a lavaras d'an oll bobl : Deuit d'am havoud. Ha pa oe tostaet ar bobl outañ, e savas aoter an Aotrou a oa bet freuzet.

31. Hag eñ a gemeras daouzeg mên hervez an niver euz a vreuriezoù bugale Jakob, ouz pehini en-doa komzet an Aotrou, o lavaroud : Izrael a vezo da ano ;

32. Hag eñ a zavas gand ar vein-ze eun aoter e ano an Aotrou, hag e reas eur han, e doare daou ant⁵⁸, war-dro d'an aoter.

33. Hag eñ a aozas ar heuneud, hag a drohas an ejenn a-dammou, hag e lakaas anezañ war ar heuneud ;

34. Hag e lavaras : Kargit leun pevar fod dour, ha taolit o war ar sakrifis-losk, ha war ar heuneud. Ha c'hoaz e lavaras : Grit eun eil gwech evel-se. Ha p'o-doe greet eun eil gwech, e lavaras : Grit eun drede wech : hag i a reas eun drede wech.

35. Hag an dourieier a rede war-dro d'an aoter, hag antou ar han a oa leun.

36. Ha pa oa deuet ar pred da ginniga ar sakrifis-losk, Elias ar profed a dostaas, hag a lavaras : Aotrou, Doue Abraham, hag Izaak, hag Izrael, diskouez hirio penaoz out Doue Izrael, ha penaoz on da zervijer, hag em-eus greet kement-mañ dre da hourhemennou.

⁵⁷ : an Doue a responto dre an tan : an Doue a lakaio tan er heuneud, hennez a vo ar gwir Doue.

⁵⁸ ant : muzul evid an had.

37. Selaou ouzin, Aotrou, selaou ouzin, evid ma tesko ar bobl-mañ penaoz out an Aotrou Doue, hag eh-eus lakaet o halon da zistrei ouzit.

38. Neuze tan an Aotrou a gouezas, hag a vevezas ar sakrifis-losk, hag ar heuneud, hag ar vein, hag ar poultr, hag an dour a oa er han a oe dizehet gantañ.

39. Pa welas ar bobl kement-se, en em daolas war he genou, hag e lavaras : An Aotrou eo, Doue e-unan, an Aotrou eo, Doue e-unan.

40. Hag Elias a lavaras dezo : Krogit e profeded Baal, ha na dehet hini anezo. Ha p'o-doe kroget enno, Elias o hasas e harz froud Kizou, hag o lazas eno.

41. Hag Elias a lavaras da Ac'hab : Pign, debr hag ev ; rag setu trouz eur glao braz.

42. Ac'hab eta a bignas evid debri hag evid eva ; hogen Elias a bignas war lein ar Harmel, hag o veza en em daolet d'an douar, o lakaad e benn etre e zaoulin,

43. E lavaras d'e baotr : Pign, ha sell etrezeg ar mor. Ha pa oe pignet hemañ, ha pa en-doe sellet, e lavaras : N'eus netra. Lavaroud a reas c'hoaz dezañ : Distro seiz gwech.

44. Er seizved gwech e lavaras : Setu eur goabrenn vihan evel kammed eun den hag a bign euz ar mor. Hag Elias a lavaras dezañ : Pign, ha lavar da Ac'hab : Stern da garr ha diskenn, gand aon na vijes paket gand ar glao.

45. Ha pa droe tu-mañ ha tu-hont, setu an neñv a deñvallaas gand ar hoabr hag an avel, hag e kouezas eur glao puill. Hag Ac'hab a bignas war e garr, hag a yeas da Jezrabel.

46. Ha dorn an Aotrou a zeuas war Elias, hag o veza lakaet eur gouriz war e zargreiz, e redas e-raog Ac'hab ken na oe deuet da Jezrabel.

XIX. Pennad.

Elias a deh diou Jezrabel. An Aotrou a gomz outañ.

1. Ac'hab a lavaras da Jezabel kement en-doa greet Elias, ha penaoz en-doa lazet an oll brofeded gand ar hleze.

2. Ha Jezabel a gasas eur hannad da Elias, evid lavaroud dezañ : Ra ray an doueed kement-se din hag ouspenn, ma ne lakaan d'an eur-mañ warhoaz da ene evel ene unan anezo.

3. Elias eta en-doe aon ; sevel a reas, hag ez eas dre oll diou e hoant, hag o veza deuet da Versabe Juda, e tilezas eno e baotr.

4. Neuze ez eas d'an distro, a-hed eun devez kerzed : ha pa oe deuet hag azezet dindan eur wezenn juniper⁵⁹, e c'hoantaas ar maro evitañ, hag e lavaras : A-walh eo ganen, Aotrou, kemer va ene ; rag n'on ket gwelloc'h eged va zadou.

5. Hag eñ en em daolas d'an douar, hag a gouskas dindan ar wezenn juniper : ha setu êl an Aotrou a stokas outañ, hag a lavaras dezañ : Sao, debr.

6. Hag eñ a zellas, ha setu ez oa e-tal e benn eur bara poazet dindan al ludu, hag eur pod dour⁶⁰ : debri hag eva a reas eta, hag e kouskas adarre.

7. Hag êl an Aotrou a zistroas eun eil gwech, a stokas outañ, hag a lavaras dezañ : Sao, debr ; rag kalz a hent a chom c'hoaz dit da ober.

⁵⁹ juniper : latin ; jenevreg.

⁶⁰ eur pod dour : eur podad-dour.

8. Hag eñ a zavas, a zebras hag a evas. Hag o veza en em greñvaet gand ar boued-se, e kerzas a-hed daou-ugent devez ha daou-ugent nozvez, beteg Horeb, menez Doue.

9. Ha pa oe deuet di, e chomas eno en eur heo : ha setu ger an Aotrou, a gomzas outañ, hag a lavaras dezañ : Petra a rez aze, Elias ?

10. Hag eñ a lavaras : Eun oaz braz em-eus evid an Aotrou, Doue an armeou, o veza ma o-deus bugale Izrael dilezet da gevredigez, ma o-deus diskaret da aoteriou, ma o-deus lazet da brofeded gand ar hleze ; ha goude ma n'eus chomet nemedon, e klaskont c'hoaz lemel va buhez diganen.

11. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Kee er-mêz, ha chom en da zav dirag an Aotrou. Ha setu an Aotrou a ya e-biou, hag eun avel braz ha kreñv a-walh evid diskara ar meneziou, hag evid brevi ar rehier e-raog an Aotrou : n'edo ket an Aotrou en avel. Ha goude an avel, eur hren-douar : n'edo ket an Aotrou er hren-douar.

12. Ha goude ar hren-douar, tan : n'edo ket an Aotrou en tan. Ha goude an tan, eun êzenn skañv.

13. Pa e glevas Elias, e holoas e benn gand e vantell, hag o veza eet er-mêz e chomas en e zav e-tal dor ar heo : ha setu eur vouez a lavaras dezañ : Petra a rez aze, Elias ? Hag eñ a lavaras :

14. Eun oaz bras em-eus evid an Aotrou, Doue an armeou, o veza ma o-deus bugale Izrael dilezet da gevredigez, ma o-deus diskaret da aoteriou, ma o-deus lazet da brofeded gand ar hleze ; ha goude ma n'eus chomet nemedon, e klaskont c'hoaz lemel va buhez diganen.

15. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Kee, ha distro dre an hent eh-eus greet a-dreuz d'an distro war-zu Damas : ha pa vezi erruet eno, eh eouli Hazael da roue war ar Siria.

16. Ha Jehu, mab Namsi, a eouli da roue war Izrael : hag Elizeüs, mab Safat euz Abelmeula, a eouli da brofed en da leh.

17. Piou bennag a deho dioh kleze Hazael, a vezo lazet gand Jehu ; ha piou bennag a deho dioh kleze Jehu, a vezo lazet gand Elizeüs.

18. Ha me a viro evidon en Izrael seiz mil den, pere n'o-deus ket pleget o glin dirag Baal, ha pere n'o-deus ket e azeulet o poki d'o dorn⁶¹.

19. Elias eta o veza eet kuit ahano, a gavas Eilzeüs, mab Safat, pehini a oa oh arad gand daouzeg re ejenned : hag eñ e-unan a rene unan euz an daouzeg re ejenned. Ha pa oe deuet Elias en e gichenn, e lakaas e vantell warnezañ.

20. Hemañ raktal o veza lezet eno e ejenned, a redas war-lerh Elias, hag a lavaras : Va lez, me az ped, da boki d'am zad ha d'am mamm, ha neuze eh heuillin ahanout. Hag Elias a lavaras dezañ : Kee, ha distro : rag greet em-eus evidout ar pezh em-boa da ober.

21. Hogen Elizeüs o veza eet kuit dioutañ, a gemeras eur re ejenned, hag a lazas anezo ; ha gand koad an arar e pozas kig an ejenned : hag eñ e roas d'ar bobl, hag i⁶² a zebras. Neuze e savas, hag eh heulias Elias, hag e servijas anezañ.

XX. Pennad.

⁶¹ d'o dorn : d'e zorn (?)

⁶² i : tud ar bobl.

Ar Siried a zo trehet.

1. Hogen Benadad, roue Siria, a zastumas e oll arme ; ha daou roue ha tregont gantañ, ha kezeg, ha kirri : hag eñ a bignas evid stourmi a-eneb Samari, hag a hronnas anezi.
2. Hag eñ a gasas kannaded etrezeg Ac’hab, roue Izrael, er gêr,
3. Evid lavaroud dezañ : Evel-henn e lavar Benadad : Da arhant ha da aour a zo din ; da wragez ivez, ha da vibien ar re wella a zo din.
4. Ha roue Izrael a respontas :Hervez da lavar, aotrou, ar roue, me ha kemend-all em-eus a zo dit.
5. Hag ar gannaded a zistroas hag a lavaras : Evel-henn e lavar Benadad, pehini en-deus or degaset etrezeg ennout : Da arhant, ha da aour, ha da wragez, ha da vibien a roy din.
6. Warhoaz eta d’an eur-mañ e kasin va zervijerien etrezeg ennout, hag i a hwilio en da di hag e ti da zervijerien : hag i a gemero gand o daouarn kement a blijo dezo, hag o haso ganto.
7. Hogen roue Izrael a halvas oll henaoured ar vro, hag a lavaras : Sellit, ha gwelit penaoz eh aoz spiou deom ; rag kaset en-deus etrezeg ennon evid va gwragez, ha va mibien, hag evid va arhant, ha va aour, ha n’em-eus ket o dinahet.
8. Hag an oll henaoured, hag an oll bobl a lavaras dezañ : Na zelaou ket anezañ, ha na aotre ket dezañ.
9. Ac’hab a lavaras eta da gannaded Benadad : Livirit d’an aotrou va roue : Ar pez eh-eus kaset da houlenni diganen, da zervijer da genta, a rin : hogen ne hellan ket ober an dra-mañ.
10. Ha pa oe distroet ar gannaded, e tanevelljont kement-se da Venadad, pehini o hasas adarre da lavaroud da Ac’hab : Ra ray an doueed kement-se din, hag ohpenn, mar bez a-walh gand poultr Samari evid leunia boz an oll bobl a zeu war va lerh.
11. Ha roue Izrael a respontas hag a lavaras : Livirit dezañ : Na fougeet ket an hini a wisk e armou, evel an hini a ziwisk anezo.
12. Hogen pa glevas Benadad kement-se, edo oh eva gand ar roueed all dindan e delt ; hag e lavaras d’e zervijerien : Gronnit kêr. Hag i a hronnas anezi.
13. Ha setu eur profed a zeuas da gavoud Ac’hab, roue Izrael, hag a lavaras dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou ; Gwelet eh-eus-te al lod braz a dud-se ? Setu e likiin anezo hirio etre da zaouarn, evid ma ouezi penaoz eo me an Aotrou.
14. Hag Ac’hab a lavaras : Dre biou ? Hag eñ a lavaras dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou : Dre baotred war-droad⁶³ priñsed ar proviñsou. Hag Ac’hab a lavaras c’hoaz : Piou a stourmo da genta ? : Hag eñ a lavaras : Te.
15. Niveri a reas ivez paotred priñsed ar proviñsou, hag e kavas anezo daouzeg hag unneg-ugent⁶⁴ : ha goude-ze e niveras ar bobl, oll vugale Izrael, seiz mil.
16. Hag i a yeas er-mêz da greisteiz : hogen Benadad a oa en e delt oh eva, hag eñ mezo, ha gantañ an daou roue ha tregont a oa deuet evid e gennerza.
17. Hogen paotred priñsed ar proviñsou a oa eet er-mêz hag e penn kenta. Benadad o veza kaset evid gouzoud petra e oa, e teujont da lavaroud dezañ : Tud eo a zo deuet er-mêz euz a Zamari.
18. Hag eñ a lavaras : Daoust pe e teuont evid ar peoh, kemerit o ez-veo ; daoust pe e teuont evid stourmi, kemerit o ez-veo.

⁶³ Dre baotred war-droad : Dre servijerien.

⁶⁴ : savet evel “daou-ugent“ unneg gwech lieskementet gand ugent.

19. Paotred priñsed ar proviñsou a yeas eta er-mêz, hag ar re all euz an arme a heulie anezo.

20. Ha pep hini a lazas an den a zeue d’e ziarbenna : hag ar Siried a dehas, hag Izrael a yeas war o lerh. Benadad, roue Siria, a dehas ivez war varh gand e varheien.

21. Ha roue Izrael o veza eet er-mêz, en em daolas war ar hezeg ha war ar hirri, hag a skoas ar Siria gand eur gouli braz.

22. Hogen eur profed a zeuas da gavoud roue Izrael, hag a lavaras dezañ : Kee, hag en em greñva ; gouez ivez ha gwel petra eh-eus da ober ; rag a-benn eur bloaz e pigno roue Siria en da eneb.

23. Hogen servijerien roue Siria a lavaras dezañ : Doueed ar menezioù eo o doueed, rag se ez int bet treh deom. Gwelloh eo eta deom stourmi outo er hompezennou, ha ni a dreho anezo.

24. Ha te, gra evel-henn : kas kuit an oll roueed euz da arme, ha laka priñsed en o leh.

25. Nevez an niver euz ar vrezilidi⁶⁵ a zo bet lazet dit, hag ar hezeg hervez an niver kenta, hag ar hirri herevz m’az-poa kent ; ha ni a stourmo outo er hompezennou, ha te a welo penaoz e trehim anezo. Eñ a gredas d’e ali, hag a reas evel-se.

26. A-benn eur bloaz eta Benadad a niveras ar Siried, hag a bignas da Afek, evid stourmi ouz Izrael.

27. Hogen bugale Izrael a oe ivez niveret : ha goude beza kemeret boued ganto, e kerzjont en o eneb, hag e stegnjont o hamp rag eneb dezo, evel daou dropellig gevr : hogen ar Siried a holoe ar vro.

28. Hag eun den Doue a dostaas, hag a lavaras da roue Izrael : Evel-henn e lavar an Aotrou : O veza ma o-deus lavaret ar Siried, Doue ar menezioù eo an Aotrou, ha n’eo ket Doue an traoniennou ; me a lakay al lod braz a dud-se etre da zaouarn, hag e ouezi penaoz eo me an Aotrou.

29. Hag i a aozas o arme an eil eneb egile e-pad seiz devez : hogen ar seizved devez e oe roet an emgann : ha bugale Izrael a lazas en eun devez kan mil den war-droad euz ar Siried.

30. Ar re a oa chomet a dehas e kêr Afek : hag eur vur a gouezas war seiz mil den warn-ugent a oa chomet. Hogen Benadad a dehas hag a yeas e kêr, en eur gambr a oa en eur gambr oll⁶⁶.

31. Hag e zervijerien a lavaras dezañ : Setu on-eus klevet penaoz roueed ti Izrael a zo habask ; lakaom eta seier war pn dargreiz, ha kerdin ouz or gouzoug, ha deom etrezeg roue Izrael : marteze e savetay or buhez.

32. Lakaad a rejont eta seier war o dargreiz, ha kerdin ouz o gouzoug, hag ez ejont etrezeg roue Izrael, hag e leverjont dezañ : Benadad, da zervijer a lavar : Lez va buhez ganen, me az ped. Hag eñ a lavaras : Mar deo c’hoaz beo, va breur eo.

33. An dud-se a welas e kement-se eun arouez vad, hag a gemeras buan ar gerze euz e henou, hag e leverjont : Da vreur Benadad⁶⁷. Hag eñ a lavaras dezo : It, ha degasit eñ din. Benadad a zeuas eta er-mêz d’e gavoud, hag eñ hel lakaas da bigna war e garr.

34. Ha Benadad a lavaras dezañ : Ar hêriou en-doa kemeret va zad war da dad-te, a zistaolin dit : ha gra dit gwileriou e Damas, evel m’en-deus greet va zad e

⁶⁵ Nevez an niver euz ar vrezilidi : sav a-nevez brezilidi.(verb : nevezi).

⁶⁶ en eur gambr a oa en eur gambr oll : mond a ree euz eur gambr d’unan all.

⁶⁷ Da vreur Benadad : da vreur eo Benadad.

Samari : ha pa or-bezo greet kevredigez, ez in kuit diouzit. Ac'hab eta a reas kevredigez gantañ, hag e lezas da vond.

35. Neuze unan euz a vibien ar brofeded a lavaras d'e genvreur hervez ger an Aotrou : Sao ganen. Hag hemañ ne fellas ket dezañ skei gantañ.

36. Hag eñ a lavaras dezañ : O veza n'eo ket fellet dit selaou mouez an Aotrou, setu pa'z i diouzin, e vezi lazet gand eul leon. Ha pa oe eet pellig dioutañ, eul leon en em gavas gantañ hag a lazas anezañ.

37. Hogen o veza kavet eun den all, e lavaras dezañ : Sko ganen. Hag hemañ a skoas gantañ, hag e hloazas.

38. Ar profed eta a yeas, hag en em gavas e-raog ar roue en hent, hag eñ en em zihizas o teurel poultr war e benn ha war e zaoulagad.

39. Ha pa oa eet ar roue e-biou, e harmas ouz ar roue, hag e lavaras : Da zervijer a oa eet er-mêz evid stourmi a-dost : ha pa dehe eun den, eur re hen degasas din, hag a lavaras : Mir an den-ze ; ha mar da kuit, da vuhez a vezo evid e vuhez, pe e paei eun talant arhant.

40. Hag endra ma oan keflusket, ha ma troen tu-mañ ha tu-hont, e tehas kerkent. Ha roue Izrael a lavaras dezañ : Hounnez eo da varn, eh-eus roet da-unan.

41. Hogen eñ a hejas raktal ar poultr diwar e benn, ha roue Izrael a anavezaz anezañ evid unan euz ar brofeded.

42. Hag e-unan a lavaras d'ar roue : Evel-henn e lavar an Aotrou : O veza ma eh-eus lezet da vond kuit euz da zorn eun den a dlee mervel, da vuhez a vezo evid e vuhez, ha da bobl evid e bobl.

43. Hogen roue Izrael a zistroas d'e di, o tisprizoud ar pezh en-doa klevet, hag e teuas e-barz Samari, kounnar vraz ennañ.

XXI. Pennad.

Ac'hab a gemer dre nerz gwinienn Nabot.

1. Goude an traou-ze, en heveleb amzer, Nabot, ar Jezraelit, en-doa eur winienn e Jezrael, war-harz palez Ac'hab, roue Samari.

2. Hag Ac'hab a lavaras da Nabot : Ro din da winienn, evid ma rin evidon eur harz⁶⁸ louzou mad da zebri, o veza ma ema tost d'am zi : ha me a roy dit eviti eur wininenn welloh : pe mar deo gwell ganez, he friz en arhant, kement ha ma talv.

3. Ha Nabot a lavaras dezañ : Doue ra viro na rofen dit degouez va zadou.

4. Ac'hab eta a zistroas d'e di, kounnaret-braz, hag brouezeg en abeg d'ar ger en-doa lavaret dezañ Nabot, ar Jezraelit, evel-henn : Ne roin ket dit degouez va zadou. Hag eñ oh en em deurel war e wele, a droas e benn ouz ar voger, ha ne zebras ket a vara.

5. Hogen Jezabel, e wreg, a zeuas d'e gavoud, hag a lavaras dezañ : Petra a laka da galon da veza trist ? Ha perag ne zebrez ket a vara ?

6. Hag eñ a lavaras dezi : Komzet em-eus ouz Nabot, ar Jezraelit, hag em-eus lavaret dezañ : Ro din da winienn evid arhant ; pe mar deo gwell ganez, e roin dit eur winienn welloh eviti. Hag eñ en-deus lavaret : Ne roin ket va gwinienn dit.

⁶⁸ eur harz : eul liorz.

7. Ha Jezabel, e wreg, a lavaras dezañ : Braz eo da halloud, ha rena a rez ervad rouantelez Izrael ! Sao, ha debr bara, ha laouena da galon : me a roy dit gwinienn Nabot, ar Jezraelit.

8. Skriva a reas eta he liziri en ano Ac'hab, hag e siellas anezo gand bizou ar roue, hag hi o hasas d'an henaoured ha d'ar re genta euz a gêr Nabot, hag a chome eno gantañ.

9. Hogen setu petra a oa war al liziri-ze : Embannit eur yun, ha likiit Nabot da azeza e-touez ar re genta euz ar bobl.

10. Gounezit daou zen, mibien Belial, en e eneb, pere a zavo eun testeni faoz outañ, o lavaroud : Droug-prezeget en-deus diwar-benn Doue ha diwar-benn ar roue : Kasit eñ er-mêz, ha labezit eñ, ken na varvo.

11. An henaoured hag ar re genta euz a gêr Nabot, pere a chome gantañ, a reas evel m'he-doa Jezabel gourhemennet dezo, hag evel ma oa skrivet war al liziri he-doa kaset dezo.

12. Embanna a rejont eur yun, hag e lakajont Nabot da azeza e-touez ar re genta euz ar bobl.

13. Hag o veza degaset daou zen, mibien an diaoul, e lakajont anezo da azeza rag eneb dezañ : hag ar re-mañ, evel tud an dioual, a zavas en e eneb, ha dirag an oll, an testeni-mañ : Droug-prezeget en-deus Nabot diwar-benn Doue ha diwar-benn ar roue : ha rag-se e kasjont anezañ er-mêz euz a gêr, hag e labezjont anezañ.

14. Hag i a gasas etrezeg Jezabel, evid lavaroud dezi : Labezet eo Nabot, ha maro eo.

15. Pa glevas Jezabel penaoz e oa labezet Nabot, ha penaoz e oa maro, e lavaras da Ac'hab : Sao, ha kemer gwinienn Nabot ar Jezraelit, pehini n'eo ket fellet dezañ⁶⁹ he rei dit, nag he rei evid arhant rag n'eo mui beo Nabot, hogen maro eo.

16. Pa glevas Ac'hab penaoz e oa maro Nabot, e savas, hag e tiskennas da winienn Nabot ar Jezraelit, evid he hemeroud.

17. Hogen ger an Aotrou a gomzas ouz Elias, an Tesnit, o lavaroud :

18. Sao, ha diskenn da ziambrouga Ac'hab, roue Izrael, a zo e Samari : setu e tiskenn da winienn Nabot, evid he hemeroud.

19. Ha te a gomzo outañ, o lavaroud : Evel-henn e lavar an Aotrou : Lazet eh-eus, hag ouspenn eh-eus kemeret dre nerz. Ha goude-ze e liviri c'hoaz : Evel-henn e lavar an Aotrou : En heveleb leh e pehini o-deus ar chas lipet gwad Nabot, e lipint ivez da wad.

20. Hag Ac'hab a lavaras da Elias : Ha va havet eh-eus enebour dit ? Hag eñ a lavaras : Kavet em-eus, o veza ma out en em werzet, evid ober an droug dirag an Aotrou.

21. Setu e kasin an droug warnout, hag e kasin da get da nested, hag e lazint euz a Ac'hab beteg al loened, hag adaleg ar henta beteg an diweza en Izrael.

22. Ha me a lakay da di evel ti Jeroboam, mab Nabat, hag evel ti Bassa, mab Abia : o veza ma eh-eus lakaet da zevel droug ennon, ha lakaet Izrael da behi.

23. Hogen diwar-benn Jezabel en-deus komzet an Aotrou, o lavaroud : Ar chas a zebro Jezabel e park Jezrahel.

24. Mar marv Ac'hab e kêr, e vezo debret gand ar chas : ha mar marv war ar menez, e vezo debret gand laboused an neñv.

⁶⁹ n'eo ket fellet dezañ : n'eus ket fellet dezañ.

25. Ne oe ket eta an heñvel ouz Ac'hab⁷⁰, evid beza en em werzet da ober an droug dirag an Aotrou ; rag Jezabel, e wreg, e zougas d'e ober.

26. Hag argaruz e tehas, en heveleb doare ma heulias an idolou o-doa greet an Amorreed, pere en-doa an Aotrou kaset da get a-zirag bugale Izrael.

27. Pa glevas Ac'hab ar geriou-ze, e rogas e zillad, e holoas e gig gand eur zae reun, hag e yunas, hag e kouskas er zah, hag e kerzas e benn izel.

28. Ha ger an Aotrou a gomzas ouz Elias, an Tesbit, o lavaroud :

29. Ha ne welez-te ket peger uvellaet eo Ac'hab dirazon ? Pa eo eta en em uvellaet en abeg din, ne gasin ket an droug en e zeiziou-eñ ; hogen e deziou e vab e kasin an droug war e di.

XXII. Pennad.

Ac'hab a zo lazet. Oc'hozias e vab a ren en e leh.

1. Tri bloaz a dremenias heb brezel etre Siria hag Izrael.

2. Hogen en trede bloaz Jozafat, roue Juda, a zsikennas etrezeg roue Izrael.

3. (Ha roue Izrael a lavaras d'e zervijerien : Ha ne ouzoh-hu ket penaoz Ramot-Galaad a zo deom, hag e ankounac'heom he zenna euz a zaouarn roue Siria ?)

4. Hag eñ a lavaras da Jozafat : Ha dond a ri-te ganen da stourmi ouz Ramot-Galaad ?

5. Ha Jozafat a lavaras da roue Izrael : Me a zo evel-dout ; va fobl ha da bobl n'int nemed unan ; va marheien a zo da varheien. Jozafat a lavaras ivez da roue Izrael : Goulenn kuzul hirio, me az pe, digand ger an Aotrou.

6. Roue Izrael eta a zastumas ar brofeded, war-dro pevar-hant anezo, hag a lavaras dezo : Ha me a dle mond da Ramot-Galaad evid brezelekaad, pe chom e peoh ? Hag i a lavaras : Pign, hag an Aotrou he lakay e dorn ar roue.

7. Ha Jozafat a lavaras : Ha n'eus ket amañ eur profed bennag d'an Aotrou, evid ma houlenim kuzul digantañ ?

8. Ha roue Izrael a lavaras da Jozafat : Chom a ra eun den dre behini e hellom goulenni kuzul digand an Aotrou : hogen me am-eus kas outañ, o veza na ziougan din netra a vad, hogen droug hepken : Micheas eo, mab Jemla. Ha Jozafat a lavaras dezañ : O roue, na gomz ket evel-se.

9. Roue Izrael a halvias eta unan euz ar re spaz⁷¹, hag a lavaras dezañ : Hast, ha degas din Micheas, mab Jemla.

10. Hogen roue Izrael ha Jozafat, roue Juda, a oa azezet pep hini war e dron, gwisket gand dillad roue, er porz dirag dor Samari : hag an oll brofeded a ziougan dirazo.

11. Sedesias, mab Kanaata, a reas ivez evitañ kerniel houarn, hag a lavaras : Evel-henn e lavar an Aotrou : Gand ar re-mañ e kefluski ar Siria, ken na vezo kaset da get ganez.

12. Hag an oll brofeded a ziouganias war eun dro, o lavaroud : Pign da Ramot-Galaad, ha kee gand eur⁷² ; hag an Aotrou he lakay e daouarn ar roue.

⁷⁰ Ne oe ket eta an heñvel ouz Ac'hab : ne oe ket eta den heñvel ouz Ac'hab.

⁷¹ ar re spaz : eur spazad.

⁷² eur : eurvad.

13. Hogen ar hannad a oa eet evid gervel Micheas, a gomzas outañ, o lavaroud : Setu an oll brofeded a ziougan mad d'ar roue : ra vezo da lavar heñvel ouz o re, ha diougan traou mad.

14. Ha Micheas a lavaras dezañ : Evel ma eo beo an Aotrou, e livirin ar pez a lavaro din an Aotrou.

15. Dond a reas eta dirag ar roue, hag ar roue a lavaras dezañ : Micheas, ha ni a dle mond da Ramot-Galaad evid brezelekaad, pe chom e peoh ? Ha Micheas a lavaras dezañ : Pign, ha kee gand eur, hag an Aotrou he lakay e daouarn ar roue.

16. Hogen ar roue a lavaras dezañ : Da bedi ha aspedi a ran, e ano an Aotrou, na gomzi ouzin nemed hervez ar wirionez.

17. Hag eñ a lavaras : Gwelet em-eus Izrael oll skignet er menezioù evel deñved heb mesaer. Hag an Aotrou en-deus lavaret : Ar re-ze n'o-deus ket a vestr ; distroet pep hini en e di e peoh.

18. Neuze roue Izrael a lavaras da Jozafat : Ha n'em-eus-me ket lvaret dit penaoz ne ziougan din netra a vad, hogen droug hepken.

19. Ha Micheas a lavaras c'hoaz : Rag-se kleo ger an Aotrou : Gwelet em-eus an Aotrou azezet war e dron, hag oll arme an neñv en he sav dirazañ a-zehou hag a-gleiz.

20. Hag an Aotrou a lavaras : Piou a douello Ac'hab, roue Izrael, evid ma pigno ha ma kouezo e Ramot ? Hag unan a lavaras evel-henn, hag eun all evel-se.

21. Hogen ar⁷³ spered a zeuas er-mêz, hag a zavas dirag an Aotrou, hag a lavaras : Me a douello anezañ. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : E pe zoare ?

22. Hag eñ a lavaras : Mond a rin er-mêz, hag e vezin eur spered gaouiad e genou e oll brofeded. Hag an Aotrou a lavaras : E douella hag e drehi a ri. Kee er-mêz, ha gra evel-se.

23. Bremañ eta setu en-deus lakaet an Aotrou eur spered gaouiad e genou e oll brofeded a zo amañ, hag an Aotrou en-deus drouglavaret diwar da benn.

24. Hogen Sedesias, mab Kanaana, a dostaas, hag a roas eur javedad da Vicheas, hag a lavaras : Spered an Aotrou, hag-eñ en-deus va dilezet, ha n'en-deus-eñ komzet ouzit ?

25. Ha Micheas a lavaras : E weloud a ri eun deiz e pehini e tremeni euz a eur gambr en eur gambr all evid en em guza.

26. Ha roue Izrael a lavaras : Kemerit Micheas, ha kasit eñ da di Amon, priñs kêr, ha da di Joaz, mab Amelec'h.

27. Ha livirit dezo : Evel-henn e lavar ar roue : Likit an den-mañ er vah, ha magit eñ gand bara glahar ha gand dour anken, ken na zistroin e peoh.

28. Ha Micheas a lavaras : Mar distroez e peoh, n'en-deus ket an Aotrou komzet drezon. Hag eñ a lavaras c'hoaz : Selaouit, oll boblou.

29. Roue Izrael ha Jozafat, roue Juda, a bignas eta etrezeg Ramot-Galaad ;

30. Ha roue Izrael a lavaras da Jozafat : Kemer da armou, ha kee d'ar stourm, goude beza gwisket da zillad da-unan : hogen roue Izrael a nevezas e zillad, hag a yeas goude d'ar stourm.

31. Hogen roue Siria en-doa gourhemennet da briñsed e zaou garr ha tregont, o lavaroud : Na stourmit ouz hini ebed, na braz na bihan, nemed ouz roue Izrael hepken.

32. Pa welas eta priñsed kirri Jozafat, e kredjont penaoz e oa eñ roue Izrael : hag oh en em strinka etrezeg ennañ, e stourment outañ : ha Jozafat a harmas.

⁷³ ar : eur.

33. Ha priñsed ar hirri a welas ervad penaoz ne oa ket eñ roue Izrael, hag e lezjont anezañ.

34. Hogen eun den a stegnas e wareg, hag a dennas eur zaez dioh an darvoud⁷⁴, hag hi a skoas roue Izrael etre ar skevent ha poull ar galon. Hag eñ a lavaras d'e garrener⁷⁵ : Tro da zorn⁷⁶, ha tenn ahanon euz an arme ; rag gwall hloazet on.

35. Hogen an emgann a badas 'hed an deiz, ha roue Izrael a chomas en e garr, troet ouz ar Siried, hag a varvas dioh ar pardaez : hogen ar gwad euz e houli a rede e-kreiz ar harr.

36. Hag eun embanner a zonas dre an oll arme, a-barz ma oa kuzet an heol, o lavaroud : Distroet pep hini d'e gêr ha d'e vro.

37. Pa oe eta maro ar roue, e oe douget da Zamari : hag i a vezias ar roue e Samari.

38. Hag a walhas e garr hag al lerennou e lenn Samari ; hag ar chas a lipas e wad, hervez ar ger en-doa lavaret an Aotrou.

39. Oberiou all Ac'hab, ha kement a reas, hag an ti olifant a zavas, hag an oll gêriou a zavas ivez, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?

40. Ac'hab eta a gouskas gand e dadou, hag Oc'hozias, e vab, a zeuas en e leh.

41. Hogen Jozafat, mab Asa, a oa deuet da reni war Juda er pevare bloaz euz a Ac'hab, roue Izrael.

42. Pemp bloaz ha tregont en-doa pa zeuas da reni, hag eñ a renas pemp bloaz warn-ugent e Jeruzalem : e vamm a oa anvet Azuba, merh Salai.

43. Hag eñ a gerzas e oll heñchou Asa e dad, ha ne droas ket diouto : hag eñ a reas ar pez a oa reiz dirag an Aotrou.

44. Koulskoude ne freuzas ket al lehiou uhel, rag ar bobl a ree sakrifisou hag a zeve ezañs war al lehiou uhel.

45. Ha Jozafat en-doe ar peoh gand roue Izrael.

46. Oberiou all Jozafat, ha kement en-deus greet, hag e emgannou, ha n'int ket bet skrivet e levr an oberiou a beb bloaz euz ar roueed Juda ?

47. Kas a reas ivez diwar an douar ar re all euz ar Sodomied a oa chomet e deizioù Asa, e dad.

48. Ne oa ket neuze a roue e Edom.

49. Ar roue Jozafat en-doa greet listri war ar mor, evid mond da Ofir da galsk aour ; hogen ne helljont ket mond, o veza ma oent brevet e Asiongaber.

50. Neuze Oc'hozias, mab Ac'hab, a lavaras da Jozafat :Ra'z ya va zervijerien war al listri : hogen ne fellas ket da Jozafat.

51. Ha Jozafat a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet ganto e kêr David, e dad : ha Joram, e vab, a renas en e leh.

52. Hogen Oc'hozias, mab Ac'hab, a oa deuet da reni war Izrael e Samari, er seitegved bloaz euz a Jozafat, roue Juda, hag eñ a renas daou vloaz war Izrael.

53. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, hag a gerzas e hent e dad hag e vamm, hag e hent Jeroboam, mab Nabat, pehini en-doa lakaet Izrael da behi.

54. Servija a reas ivez Baal, hag eh azeulas anezañ, hag eh heskinas an Aotrou, gand an oll draou en-doa greet e dad.

⁷⁴ dioh an darvoud : dre zarvoud.

⁷⁵ d'e garrener : da rener e garr.

⁷⁶ Tro da zorn : tro, cheñch tu.

PEVARE LEVR AR ROUEED

Hervez an Hebreed,

An eil euz a Valakim

I.Pennad.

Elias a ziougan e varo da Oc'hozias.

1. Goude ma oe maro Ac'hab, Moab en em zavas a-eneb Izrael.
2. Hogen Oc'hozias o veza kouezet dre gael e gambr en-doa e Samari, a oe klañv ; hag eñ a gasas kannaded, hag a lavaras dezo : It, ha goulennit kuzul digand Beelzebub, doue Akkaron, da houzoud ha me a vezo beo goude ar hleñved-mañ.
3. Hogen êl an Aotrou a gomzas ouz Elias an Tesbit, o lavaroud : Sao, ha kee war arbenn da gannaded roue Samari, ha lavar dezo : Ha n'eus ket a Zoue en Izrael, ma'z it da houlenn kuzul digand Beelzebub, doue Akkaron ?
4. Rag-se evel-henn e lavar an Aotrou : Ne ziskenni ket euz ar gwele war pehini out pignet, hogen mervel a ri. Hag Elias a yeas kuit.
5. Hag ar gannaded a zistroas etrezeg Oc'hozias ; hag eñ a lavaras dezo : Perag oh-hu distroet ?
6. Hag i a lavaras dezañ : Eun den a zo deuet war on arbenn, hag en-deus lavaret deom-ni : It, ha distroit etrezeg ar roue en-deus ho kaset, ha livirit dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou : Ha n'eus ket a Zoue en Izrael, ma kasez da houlenn kuzul digand Beelzebub, doue Akkaron ? Rag-se ne ziskenni ket euz ar gwele war pehini out pignet, hogen merevl a ri.
7. Hag eñ a lavaras dezo : Pe zoare ha pe wiskamant en-deus an den-ze a zo deuet war hoh arbenn, hag en-deus lavaret kement-se deoh ?
8. Hag i a lavaras : Eun den bleveg eo, en-deus war e zargreiz eur gouriz ler. Hag eñ a lavaras : Elias an Tesbit eo.
9. Hag eñ a gasas etrezeg ennañ priñs hanter-kant brezeliad, hag an hanter-kant a oa dindannañ. Hag hemañ a bignas etrezeg Elias pehini a oa azezet war lein eur menez, hag a lavaras dezañ : Den Doue, ar roue a hourhemenn dit diskenni.
10. Hag Elias a respontas hag a lavaras da briñs an hanter-kant : Mar don eun den Doue, diskennet tan euz an neñv, ha devet ahanout, ha da hanter-kant den. Hag an tan a ziskennas euz an neñv, hag a zegas anezañ, hag an hanter-kant a oa gantañ.
11. Ar roue a gasas adarre eur priñs all euz a hanter-kant den, hag an hanter-kant gantañ. Hag hemañ a lavaras da Elias : Den Doue, eevl-henn e lavar ar roue : Hast, ha diskenn.
12. Hag Elias a respontas hag a lavaras : Mar don eun den Doue, diskennet tan euz an neñv, ha devet ahanout, ha da hanter-kant den. Hag an tan a ziskennas euz an neñv, hag a zegas anezañ, hag an hanter-kant.

13. Ar roue a gasas adarre eun trede priñs euz a hanter-kant den, hag an hanter-kant a oa gantañ. Pa oe deuet hemañ, e plegas e zaoulin dirag Elias, hag e pedas anezañ, o lavaroud : Den Doue, na zispriz ket va buhez, ha buhez da zervijerien a zo ganen.
14. Setu eo bet diskennet an tan euz an neñv, hag en-deus devet an daou briñs kenta euz a hanter-kant den, hag an hanter-kant a oa ganto : hogen bremañ az pedan da gaou truez ouz va buhez.
15. Hogen êl an Aotrou a gomzas ouz Elias, o lavaroud : Diskenn gantañ, n 'az-pezh ket a aon. Svel a reas eta, hag e tiskennas gantañ etrezeg ar roue.
16. Hag eñ a lavaras dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou : O veza ma eh-eus kaset kannaded evid goulenn kuzul digand Beelzebub, Doue Akkaronn, evel pa ne vije ket a Zoue en Izrael digand pehini e hellfes goulenn kuzul, dre ze ne ziskenni ket euz ar gwele war pehini out pignet, hogen mrvel a ri.
17. Mervel a reas eta hervez ger an Aotrou lavaret gand Elias. Ha Joram, e vreur, a zeuas eno en e leh, en eil bloaz euz a Joram, mab Jozafat, roue Juda : rag n'endoa ket a vab.
18. Oberiou all Oc'hozias, ha kement en-deus greet, ha n'int ket bet skrivet e levr an oberiou a beb bloaz euz a roueed Izrael ?

II. Pennad.

Elias gorreet en neñv en eur harr tan. Elizeüs a zastum e vantell.

1. Pa fellas d'an Aotrou gorrea Elias d'an neñv gand eur gorventenn, e c'hoarvezas penaoz Elias hag Etizeüs a zeue euz a Haalgala.
2. Hag Elias a lavaras da Elizeüs : Chom amañ, rag an Aotrou en-deus va haset da Vetel. Hag Elizeüs a lavaras dezañ : Evel ma eo beo an Aotrou, ha ma eo beo da ene, ne guitain ket ahanout. Diskenni a rejont eta da Vetel.
3. Ha mibien ar brofeded, pere a oa e Betel, a zeuas da gavoud Elizeüs, hag a lavaras dezañ : Ha ne ouzout-te ket penaoz an Aotrou a lamo hirio da vestr diganez ? Hag eñ a lavaras : E houzoud a ran ; tavit.
4. Hag Elias a lavaras da Elizeüs : Chom amañ, rag an Aotrou en-deus va haset da Jeriko. Hag eñ a lavaras : Evel ma eo beo an Aotrou, ha ma eo beo da ene, ne guitain ket ahanout. Hag i a zeuas da Jeriko.
5. Ha mibien ar brofeded, pere a oa e Jeriko, a zeuas ad gavoud Elizeüs, hag a lavaras dezañ : Ha ne ouzout-te ket penaoz an Aotrou a lamo hirio da vestr diganez ? Hag eñ a lavaras : E houzoud a ran ; tavit.
6. Hag Elias a lavaars da Elizeüs : Chom amañ, rag an Aotrou en-deus va haset beteg ar Jourdan. Hag eñ a lavaras : Evel ma eo beo an Aotrou, ha ma eo beo da ene, ne guitain ket ahanout. Hag i a yeas o-daou.
7. Ha daou-ugent den euz a vibien ar brofeded a yeas war o lerh, hag a chomas rag eneb dezo a-bell. Hag i o-daou a chomas war aod ar Jourdan.
8. Hag Elias a dennas e vantell, hag a blegas anezi, hag a skoas war an doureier, pere en em rannas a bep tu ; hag i o-daou a dreuzas war ar seh.
9. Ha pa oent treuzet, Elias a lavaras da Elizeüs : Goulenn ar pezh a fell dit a rafen evidout, kent ha me vezin lamet diganez. Hag Elizeüs a lavaras : Bezet, me az ped, da spered daou gemend-all ennon.
10. Hag Elias a lavaras : Eun dra ziêz eh-eus goulennet : koulskoude mar

gwelez ahanon, pe vezin lamet diganez, ez-pezo ar pez eh-eus goulennet ; ma n'am gwelez ket, n'az-pezo ket.

11. Hag endra ma kerzent, ha ma valeent en eur gomza, setu eur harr dan ha kezeg tan o rannas o-daou : hag Elias a bignas e-kreiz eur gorventenn.

12. Hogen Elizeüs a welas, hag a harmas : Va zad, va zad, karr Izrael ha e garreer. Ha n'her gwelas mui, hag eñ a grogas en e zillad, hag o rogas e daou hanter.

13. Hag eñ a zavas mantell Elias, en-doa taolet dezañ : hag o tistrei e chomas war aod ar Jourdan.

14. Hag eñ a skoas war an doureier gand mantell Elias, en-doa taolet dezañ, ha n'en em rannjont ket ; hag eñ a lavaras : Peleh ema bremañ Doue Elias ? Hag eñ a skoas war an doureier pere en em rannas tu-mañ ha tu-hont, hag Elizeüs a dreuzas.

15. Pa welas kement-se mibien ar brofeded, pere a oa e Jeriko rag eneb, e leverjont : Spered Elias a zo diskennet war Elizeüs. Hag i a yeas war e arbenn hag en em strinkas d'an douar dirazañ,

16. Hag a lavaras dezañ : Setu ez eus e-touez da zervijerien hanter-kant den kreñv, pere a hell mond da glask da vestr, gand aon n'en-defe spered an Aotrou o skrapet, hag e daolet war eur menez bennag, pe en eun draonienn bennag. Hag eñ a lavaras dezo : Na gasit ket.

17. Hogen i a hegas anezañ, ken na aotreas dezo ha ken na lavaras : Kasit. Hag i a gasas hanter-kant den, pere goude beza e glasket e-pad tri devez, n'her havjont ket.

18. Hag i a zistroas da gavoud Elizeüs, pehini a chome e Jeriko, hag eñ a lavaras dezo : Ha n'em-boa ket me lavaret deoh : Na gasit ket ?

19. Tud kêr a lavaras ivez da Elizeüs : Setu beza o chom er gêr-mañ a zo euz ar re wella, evel ma welez da-unan, Aotrou ; hogen an doureier a zo gwall fall, hag an douar distu.

20. Hag eñ a lavaras : Degasit din eul lestr nevez, ha likit holen ennañ. Ha p'ho-po e zegaset,

21. Ez eas da feunteun an doureier, hag o lakaad an holen enni, e lavaras : Evel-henn e lavar an Aotrou : Yac'haet em-eus an doureier-ze, ha ne vezo mui a varo enno, nag a fraoster.

22. An doureier-ze eta a zeuas da veza yahuz hag a zo c'hoaz bremañ, hervez ar ger a lavaras Elizeüs.

23. Hag eñ a bignas ahano da Vetel ; ha pa bigne dre an hent, bugale vihan pere a oa deuet er-mêz euz a gêr, a ree goap anezañ, o lavaroud : Pign, moal : pign, moal.

24. Hag eñ a zellas, hag o gwelas, hag a villigas anezo e ano an Aotrou : ha daou ours a zeuas er-mêz euz a eur hoad, hag a ziskolpas daou ha daou-ugent euz ar vugale-ze.

25. Hogen eñ a yeas ahano war menez Karmel, hag a zistroas ahano da Zamari.

III.Pennad.

Elizeüs a laka dour da redeg heb glao.

1. Hogen Joram, mab Ac'hab, a renas war Izrael e Samari en triwehved bloaz

euz a Jozafat, roue Juda : hag eñ a renas daouzeg vloaz.

2. Ober a reas an droug dirag an Aotroun hogen n'her greas ket evel e dad hag e vamm : rag eñ a lamas skeudennou Baal, a oa bet greet gand e dad.

3. Koulskoude en em roas da behejou Jeroboam, mab Nabot, pehini a lakaas Izrael da behi ; ha n'en em dennas ket diouto.

4. Hogen Mesa, roue Moab, a vage kalz deñved, hag eñ a bae da roue Izrael kant mil oan, ha kant mil tourh, gand o hreñ.

5. Hogen pa oe maro Ac'hab, e torras ar gevredigez en-doa greet gand roue Izrael.

6. Rag se ar roue Joram a yeas en deiz-se er-mêz euz a Zamari, hag a niveras Izrael oll.

7. Hag eñ a gasas etrezeg Jozafat, roue Juda, o lavaroud : Roue Moab a zo en em dennet diouzin, deus ganen da vrezelekaad outañ. Ha Jozafat a lavaras : Pigna a rin ; ar pez a zo din, a zo dit ; va fobl a zo da bobl, ha va hezeg a zo da gezeg.

8. Hag eñ a lavaras : Dre be hent e pignim-ni ? Ha Joram a lavaras : Dre zistro an Idume.

9. Roue Izrael ha roue Juda, ha roue Edom a yeas eta, hag a droidellas dre an hent a-hed seiz devez ; ha ne oa ket a zour evid an arme, nag evid al loened a oa war he heul.

10. Ha roue Izrael a lavaras : Gwa, gwa ! An Aotrou en-deus or strollet tri roue kevred evid ol lakaad etre douarn Moab.

11. Ha Jozafat a lavaras : Ha bez' ez eus amañ eur profed d'an Aotrou, evid ma pedim an Aotrou drezañ ? Hag unan euz a zervijerien roue Izrael a respontas : Ema amañ Elizeüs, mab Safat, pehini a skuille dour war daouarn Elias.

12. Ha Jozafat a lavaras : Ema ger an Aotrou ennañ. Ha roue Izrael, ha Jozafat, roue Juda, ha roue Edom, a ziskennas d'e gavoud.

13. Hogen Eliseüs a lavaras da roue Izrael : Petra a zo etre me ha te ? Kee da gavoud profeded da dad ha da vamm. Ha roue Izrael a lavaras dezañ : Perag en-deus-eñ an Aotrou strollet an tri roue-mañ, evid o lakaad etre daouarn Moab ?

14. Hag Eliseüs a lavaras dezañ : Evel ma eo beo Aotrou an armeou, dirag pehini a zavan, ma na zoujfen ket Jozafat, roue Juda, n'am-bije ket sellet ouzit, ha n'am-bije ket da welet.

15. Hogen bremañ degasit din eun telenner. Ha pa gane an telenner, e teuas dorn an Aotrou war Elizeüs, hag eñ a lavaras :

16. Evel-henn e lavar an Aotrou. Grit kalz poullou e aoz ar froud-se.

17. Hag evel-henn e lavar an Aotrou : Ne welot nag avel na glao ; hag an aoz-se en em leunio a zour ; hag eh evot-c'hwi, hag ho tud, hag ho loened.

18. Ha kement-se a zo nebeud dirag an Aotrou : ouspenn-ze e lakay Moab etre ho taouarn.

19. C'hwi a ziskaro kement kêr greñv, ha kement kêr dilennet ; c'hwi a droho kement gwezenn frouezeg ; c'hwi a stanko an oll feunteuniou dour ; c'hwi a holoy gand mein an oll barkou mad.

20. Hag antronoz diouz ar mintin : er pred ma kinniger ar sakrifis, setu e teuas an doureier a-hed hent Edom, hag an douar a oe leun a zour.

21. Pa glevas ar Voabited penaoz e oa pignet ar roueed-se evid stourmi outo, e tastumjont ar re oll a zouge armou, hag ouspenn, hag e chomjont war o harzou.

22. Hag i a zavas dioh ar mintin, ha pa bigne an heol a-zioh d'an doureier, hag ar Voabited a welas dirazo an doureier ruz evel gwad ;

23. Hag i a lavaras : Gwad ar hleze eo : ar roueed a zo en em gannet an eil oh

egile, hag en em lazet o-deus : bremañ, Moab, kerz d'az preiz.

24. Hag i a gerzas etrezeg kamp Izrael : hogen Izrael a zavas, hag a skoas war ar Voabited, pere a dehas dirazo. Ar re a oa treh a zeuas eta hag a zsipennas ar Voabited.

25. Hag i a ziskaras o hêriou ; hag o kemeroud peb a vên, e leunjont ar parkou ar re wella : hag e stankjont an oll feunteuniou dour. Hag e trohjont an oll wez frouezeg, en heveleb doare na chomas nemed ar mogeriou pri : hag ar gêr a oe kelhiet gand ar vatalmerien, hag eul lod braz anezi a oe diskaret.

26. Pa welas roue Moab penaoz e oa trehet gand an enebourien, e kemeras gantañ seiz-kant den a zouge kleze, evid en em deurel war roue Edom : ha ne helljont ket.

27. Neuze e kemeras e vab, kenta-ganet, a dlee rena war e lerh, hag e kinnigas anezañ e sakrifis-losk war ar vur : hag e c'hoarvezas eun argarzigedez en Izrael ; ha raktal en em dennjont ahano, hag e tistrojont d'o bro.

IV. Pennad.

Elizeüs a gresk eoul eun intañvez paour.

1. Neuze unan euz a wragez ar brofeded a harmas ouz Elizeüs, o lavaroud : Va ozah, da zervijer, a zo maro, ha te a oar penaoz da zervijer a zouje an Aotrou : ha setu e gredour a zeu evid kemeroud va mibien da sklaved dezañ.

2. Hag Elizeüs a lavaras dezi : Petra a fell dit a rajen evidout ; Lavar din, petra eh-eus-te en da di ? Hag hi a lavaras : Me, da vatez, n'em-eus netra em zi, nemed eun nebeud eoul, gand pehini en em frotan.

3. Hag eñ a lavaras dezi : Kee, goulenn e prest digand da oll amezeien kalz listri goullo.

4. Ha kee en da di, ha serr da zor warnout ha war da vibien : ha skuill neuze en oll listri-ze ; pa pa vezint leun, tenn o⁷⁷.

5. Ar wreg eta a yeas, hag a zerras an nor warnezi, ha war he mibien : ar remañ a zegase dezi al listri, hag hi a skuille enno.

6. Ha pa oe leuniet al listri, e lavaras-hi d'he mab : Degas c'hoaz eul lestr din. Hag eñ a lavaras : N'em-eus mui. Hag an eoul a zac'has.

7. Hogen hi a zeuas, hag a zanevellas kement-se d'an den Doue. Hag eñ a lavaras dezi : Gwerz an eoul, ha distaol d'az kredour ; ha te, ha da vibien, bevit diwar ar pezh a chom en dilerh.

8. Hogen eun deiz Elizeüs a dremene der Zamari ; hag eno ez oa eur wreg pinvidig-braz pehini a zalhas anezañ evid debri bara : hag o veza ma tremene aliez dre eno, e tistroe etrezeg enni evid debri bara.

9. Hag hi a lavaras d'he ozah : Me a wel penaoz an den-ze pehini a dremen aliez e-biou deom, a zo eun den Doue ha santel.

10. Groom eta dezañ eur gambr vihan, ha lakom enni evitañ eur gwele, hag eun daol, hag eur gador, hag eur hantoler, evid ma chomo eno, pa zeuy d'or gweloud.

11. Eun deiz eta o veza deuet di, ez eas er gambr-se, hag e tiskuizas eno.

12. Hag eñ a lavaras da Hiezi, e baotr⁷⁸ : Galv ar Zunamitez-se. Hag hemañ o

⁷⁷ tenn o : o zenn, tenn anezo.

⁷⁸ e baotr : e zervijer.

veza he galvet, hag hi o veza deuet dirazañ,

13. E lavaras Elizeüs d'e baotr : Lavar dezi : Setu eh-eus bet kalz a azaouez evidom e pep tra ; petra a fell dit a rajen evidout ? Ha bez' eh-eus-te eur gevridi bennag ? Ha felloud a ra dit e komzfen ouz ar roue, pe ouz priñs an arme ? Hag hi a lavaras : E-kreiz va zud e choman.

14. Hag Elizeüs a lavaras : Petra eta a fell dezi a rajen eviti ? Ha Giezi a lavaras : Na glask ket petra : n'he-deus ket a vab, hag heh ozah a zo koz.

15. Hag eñ a hourhemennas da Hiezi he gervel hi : hag hi o veza deuet, en em zalhas e-tal an nor.

16. Hag Elizeüs a lavaras dezi : A-benn bloaz, er pred-mañ, hag en heveleb eur-mañ, mar dout c'hoaz beo, ez-pezo eur mab en da gov. Hag hi a lavaras : Nann, me az ped, va aotrou, den Doue, na lavar ket a hevier d'az matez.

17. Hag ar wreg-se a engehentas, hag a hanas eur mab, er pred hag en heveleb eur m'en-doa lavaret Elizeüs.

18. Hogen ar bugel a greskas. Hag o veza eet eun deiz da gavoud e dad a oa gand ar vederien,

19. E lavaras d'e dad : Poan-benn em-eus, poan-benn em-eus. Hag an tad a lavaras da eur paotr : Kemer eñ, ha doug eñ d'e vamm.

20. Hag hemañ a gemeras ar bugel, hag e zougas d'e vamm ; hag hi e lakaas war he barlenn beteg kreisteiz, hag eñ a varvas.

21. Hag hi a bignas, hag a lakaas anezañ war gwele an den Doue ; hag o veza serret an nor, ez eas er-mêz,

22. Hag e halvas heh ozah, hag e lavaras dezañ : Kas ganen, me az ped, unan euz ar baotred, hag eun azenez, evid ma redin beteg an den Doue, ha ma tistroin.

23. Hag eñ a lavaras dezi : Perag ez eez-te d'e gavoud ? N'eo ket hirio ar henta euz ar miz, nag ar Sabbat. Hag hi a lavaras : Mond a rin.

24. Hag hi a zibras an azenez, hag a lavaras d'ar paotr : Kas ahanon, ha va has buan, ha na ra ket a zale din en hent : gra ar pez a hourhemennan dit.

25. En em lakaad a reas eta en hent, hag e teuas da gavoud an den Doue war menez Karmel. Pa he gwelas an den Doue dirazañ, e lavaras da Hiezi e baotr : Setu ar Zunamitez-se.

26. Kee eta war heh arbenn ha lavar dezi : Ha mad ema an doare ganez, ha gand da ozah, ha gand da vab ? Hag hi a lavaras : Mad.

27. Ha pa oe deuet-hi da gavoud an den Doue war ar menez, en em strinkas d'e dreid ; ha Giezi a dostaas evid he zenna alese. Hogen an den Doue a lavaras : Lez hi ; rag heh ene a zo gwall hlaharet, hag an Aotrou en-deus e guzet ouzin, ha n'en-deus ket e roet da anaoud din.

28. Hag hi a lavaras dezañ : Ha goulennet em-eus-me eur mab digand va aotrou ? Ha n'em-eus-me ket lavaret dit : Na douell ket ahanon ?

29. Neuze eñ a lavaras da Hiezi : Gouriz da zargreiz, ha kemer va baz en da zorn, ha kee. Mar kavez eur re en hent, na zalud ket anezañ : ha mar salud eur re ahanout, na zalud ket anezañ ; hag e liki va baz war penn ar bugel.

30. Hogen mamm ar bugel a lavaras da Elizeüs : Evel ma eo beo an Aotrou, ha ma eo beo da ene, n'az kuitain ket. Hag eñ a zavas hag a yeas war he lerh-hi.

31. Hogen Giezi a oa eet en o raog, hag en-doa lakaet ar vaz war penn ar bugel ; ha ne zeuas dezañ nag al lavar, nag ar skiant. Hag eñ a yeas war arbenn d'e vestr, hag a zanevellas dezañ, o lavaroud : N'eo ket distroet ar bugel a varo da veo.

32. Ha pa zeuas Elizeüs en ti, setu ar bugel maro a oa gourvezet war e wele-eñ.

33. Ha pa oe eet er gambr, e serras an nor warnezañ, ha war ar bugel, hag e

pedas an Aotrou.

34. Hag eñ a bignas, hag a hourvezas war ar bugel : hag e lakaas e henou war e henou, hag e zaoulagad war e zaoulagad, hag e zaouarn war e zaouarn : hag eñ en em astennas warnezañ, ha kig ar bugel a oe tommet.

35. Hag eñ a zsitroas, hag a valeas en ti tu-mañ ha tu-hont : hag e pignas, hag e hourvezas warnezañ : hag ar bugel a zihenaouas seiz gwech, hag a zigoras e zaoulagad.

36. Hag Elizeüs a halvas Giezi hag a lavaras dezañ : Galv ar Zunamitez-se. Hag hi o veza bet galvet, a zeuas d'e gavoud. Hag Elizeüs a lavaras dezi : Kemer da vab.

37. Hag hi a zeuas, hag en em strinkas d'e dreid, hag azeulas he dremmm d'an douar : hag hi a gemeras he mab hag a yeas kuit.

38. Hag Elizeüs a zistroas da Halgala. Hogen naonegez a oa er vro, ha mibien ar brofeded a chome gantañ ; hag eñ a lavaras da unan euz e baotred : Kemer eur pod braz, ha laka boued da boaza evid mibien ar brofeded.

39. Hag unan a yeas er-mêz evid dastumi louzou er parkeier : hag eñ a gavas evel eur winienn houez, a behini e tastumas gouezirvin leiz e vantell : hag o veza distroet, o draillas e pod ar boued ; rag ne ouie ket petra e oa.

40. Neuze e rojont da zebri d'ar genvreudeur : ha po'o-doe tañvaet ar re-mañ euz ar boued, e harmjont, o lavaroud : Den Doue, ema ar maro er pod-se ; ha ne helljont ket debri.

41. Hag eñ a lavaras : Degasit bleud. Ha p'o-doe e zegaset dezañ, hel lakaas er pod, hag e lavaras : Roit bremañ da zebri d'an oll dud ; ha ne oe mui netra a hwero er pod.

42. Hogen eun den a zeuas euz a Vaalsalisa pehini a zegase d'an den Doue baraou ar henta frouez⁷⁹, ugent bara heiz, hag ed nevez en e visah. Hag Elizeüs a lavaras : Ro d'ar bobl, evid ma tebro.

43. Hag e vevel a lavaras dezañ : Petra eo kement-se, evid ma e rojen da gant den ? Hag Elizeüs a lavaras adarre : Ro d'ar bobl, evid ma tebro : rag evel-henn e lavar an Aotrou : Debri a raint, hag e vezo en o dilerh⁸⁰.

44. Lakaad a reas eta kement-se dirazo : i a zebras, hag e oe en o dilerh, hervez ger an Aotrou.

V. Pennad.

Elizeüs a ro ar yehed da Naaman a oa klañv gand al lovrentez.

1. Naaman, priñs arme roue Siria, a oa eun den galloudeg hag enoret-braz e-keñver e aotrou : rag drezañ en-doa an Aotrou saveteet ar Siria : eun den kreñv ha pinvidig e oa, hogen lovr e oa.

2. Hogen laeron a oa eet er-mêz euz a Ziria ; hag o-doa degaset ganto da sklavez euz a vro Izrael eur plahig vihan, pehini a zeuas da vatez da wreg Naaman.

3. Hag houmañ a lavaras d'he mestrez : A-youl e vije eet va aotrou da gavoud ar profed a zo e Samari : heb mar en-divije e yahac'haet euz al lovrentez en-deus.

4. Naaman eta a yeas da gavoud heh aotrou, hag a zanevellas dezañ, o

⁷⁹ baraou ar henta frouez : baraou bet greet a-nevez 'zo.

⁸⁰ hag e vezo en o dilerh : e chomo c'hoaz war o lerh.

lavaroud : Evel-henn hag evel-henn he-deus lavaret eur plah euz a vro Izrael.

5. Ha roue Siria a lavaras dezañ : Kee, ha me a gaso lizer da roue Izrael. Hag eñ en em lakaas en hent, hag a gasas gantañ deg talant arhant ha c’hweh mil skoed aour, ha deg sae nevez.

6. Hag eñ a roas al lizer da roue Izrael, war pehini e oa ar geriou-mañ : Pa vezo roet al lizer-mañ dit, gouez penaoz em-eus kaset dit Naaman, va zervijer, evid ma yac’hai anezañ euz e loventez.

7. P’en-doe lennet roue Izrael al lizer, e rogas e zillad, hag e lavaras : Ha Doue on-me, evid ma hellfen lemel ha rei ar vuhez, pa zegas hennez din eun den evid ma e yac’hain euz e loventez ? Likit evez, ha gwelit ma ne glask⁸¹ ket eun darvoud em eneb.

8. Pa glevas Elizeüs, an den Doue, penaoz roue Izrael en-doa roget e zillad, e kasas etrezeg ennañ, evid lavaroud dezañ : Perag eh-eus-te roget da zillad ? Deuet d’am havoud, ha gouezet penaoz ez eus eur profed en Izrael.

9. Naaman eta a zeuas gand e gezeg hag e girri, hag a chomas tal dor ti Elizeüs.

10. Hag Elizeüs a gasas dezañ eur hannad, hag a lavaras : Kee, hag en em walh seiz gwech er Jourdan, ha da gig a zeuy da veza yah, ha te da veza glan.

11. Naaman o veza savet droug ennañ, a yee kuit, o lavaroud : Me a grede e teuje er-mêz d’am havoud, en em zalhje en e zav o hervel ano an Aotrou, e Zoue, e lakaje e zorn war leh al loventez, hag e yac’haje ahanon.

12. Ha n’eo ket gwelloh an Abna hag ar Farfar, steriou Damas, eged oll zoureier Izrael, evid ma en em walhin enno, ha ma vezin glannaet ? Pa oe eta troet e gein gantañ, ha pa’z eas kuit, droug braz ennañ,

13. E zervijerien a dostaas outañ, hag a lavaras dezañ : Va zad, ha pa en-defe ar profed lavaret dit eun dra ziêz, evid gwir e vije bet red dit e ober : Pegement⁸² gwelloh pa lavar bremañ dit : En em walh, hag e vezi glannaet ?

14. Diskenni a reas, hag en em walhas seiz gwech er Jourdan hervez lavar an den Doue, hag e gig a zistroas evel kig eur bugel bihan, hag eñ a oe glannaet.

15. Hag o veza distroet etrezeg an den Doue gand e oll hent, e teuas, e savas dirazañ, hag e lavaras : Gouzoud a ran evid gwir penaoz n’eus Doue all ebed en oll zouar nemed hini Izrael. Kemer eta, me az ped, ar pez a ro dit da zervijer.

16. Hag eñ a lavaras : Evel ma eo beo an Aotrou, dirag pehini on savet, ne gemerin ket. Ha petra bennag ma felle dezañ e redia, ne aotreas ket.

17. Ha Naaman a lavaras : Evel ma kiri ; hogen va lez, me az ped, me da zervijer, da gas ganen daou zamm mul a zouar⁸³ : rag da zervijer ne ginnigo mui na sakrifis na viktim da zoueed a-ziavêz, nemed d’an Aotrou.

18. E kement-mañ hepken e pedi an Aotrou evid da zervijer, pa’z ay va aotrou e templ Remmon, evid azeuli, oh en em harpa war va dorn, ma azeulan eñ en heveleb leh, ma tistaolo an Aotrou kement-se din, me da zervijer.

19. Hag Elizeüs a lavaras dezañ : Kee e peoh. Hag eñ a yeas kuit goude eun nebeud hent.

20. Hogen Giezi, paotr an den Doue, a lavaras : Va mestr en-deus espenet an Naaman-ze euz a Ziria, pa n’eo ket fellet dezañ degemeroud ar pez en-doa degaset. Evel ma eo beo an Aotrou, e redin war e lerh, hag e tegemerin eun dra digantañ.

⁸¹ ma ne glask : hag-eñ ne glask.

⁸²Pegement : Pegen

⁸³ daou zamm mul a zouar : ? douar, daou zamm, d’eur mul.

21. Giezi a yeas eta war-lerh Naaman ; ha pa her gwelas hemañ o tiredeg etrezeg ennañ, e lammaz euz e garr evid mond war e arbenn, hag e lavaraz : Hag ervad ez a pep tra ?

22. Hag eñ a lavaraz : Ervad ez a. Va mestr en-deus va haset etrezeg ennout evid lavaroud : Daou zen yaouank, euz a vibien ar brofeded, a zo deuet raktal euz a venez Efraim d'am havoud : ro evito eun talant arhant, ha diou zae nevez.

23. Ha Naaman a lavaraz : Gwelloc'h eo din degemeroud daou dalant. Hag eñ a reas dezañ o hemeroud, hag e liammaz an daou dalant arhant e diou zah, hag an diou zae, hag o lakaas war daou euz e baotred, pere o dougas dirag Giezi.

24. Ha pa oe deuet ar pardaez, o hemeras-eñ euz a zaouarn ar re-mañ, hag o lakaas en e di ; hag eñ a gasas kuit an dud-se, pere a zistroas.

25. Hogen eñ a yeas e-barz hag a zavas dirag e vestr. Hag Elizeüs a lavaraz dezañ : A beleh e teuez, Giezi ? Hag eñ a lavaraz : E neb leh n'eo bet eet da zervijer.

26. Hag Elizeüs a lavaraz : Ha ne oa ket va halon eno, pa eo distroet an den-ze euz e garr evid mond war da arbenn ? Bremañ eta eh-eus degemeret arhant, eh-eus degemeret saeou evid prena gwez-olived, ha gwiniennou, ha deñved, hag ejenned, ha mevellou, ha mitizien.

27. Hogen lovrentez Naaman en em stago ouzit, hag ouz da ouenn da viken. Ha Giezi a bellaas dioutañ gwenn evel an erh gand al lovrentez.

VI. Pennad.

Gronnet eo Samari. Naonegez direiz.

1. Hogen mibien ar brofeded a lavaraz da Elizeüs : Setu al leh e pehini e chomom dirazout, a zo re enk evidom.

2. Deom beteg ar Jourdan, ha kemerom beb a dreust er hoad evid ma savim eno eul leh evid chom. Hag eñ a lavaraz : It.

3. Hag unan anezo a lavaraz : Deus eta ivez ganeom. Hag eñ a lavaraz : Mond a rin.

4. Hag eñ a yeas ganto. Ha pa oent deuet etrezeg ar Jourdan, e trohjont koad.

5. Hogen c'hoarvezoud a reas penaoz pa edo unan anezo o troha eun treust, e kouezas houarn e vouhal en dour ; hag hemañ a harmaz hag a lavaraz : Allaz, allaz, allaz, va mestr, e prest e oa bet roet din.

6. Hag an den Doue a lavaraz : Peleh eo kouezet ? Hag eñ a ziskouezas al leh. Hag Elizeüs a drohas eun tamm koad, hag e daolas eno : hag an houarn a zeuz war-eeun.

7. Hag eñ a lavaraz : Kemer. Hag hemañ a astennas e zorn, hag e gemeras.

8. Hogen roue Siria a vrezekae ouz Izrael ; hag eñ a zalhas kuzul gand e zervijerien, o lavaroud : Ele leh-mañ-leh e likim spiou.

9. An den Doue a gasas eta etrezeg roue Izrael, o lavaroud : Laka evez na dremenit dre al leh-mañ-leh ; rag ar Siried a zo eno e spi.

10. Roue Izrael a gasas eta d'al leh en-doa lavaret dezañ an den Doue, hag a gemeras anezañ ; hag eñ en em ziwallas eno ouspenn eur wech hag ouspenn diou wech.

11. Kalon roue Siria a oe trubuillet gand kement-se : hag o veza galvet e zervijerien, e lavaraz dezo : Perag n'hoh-eus-hu ket roet da anaoud din piou a werz

ahanon e-keñver roue Izrael ?

12. Hag unan euz e zervijerien a lavaras : Den ebed, aotrou va roue ; hogen Elizeüs ar profed, pehini a zo en Izrael, eo a ro da anaoud da roue Izrael kement ger a levez en da gambr.

13. Hag eñ a lavaras dezo : It ha gwelit peleh ema eñ, evid ma kasin d'e gerhoud. Hag i a zeuas da lavaroud dezañ : Setu ema e Dotan.

14. Kas a reas eta di marheien ha kirri, hag eun arme greñv : hag ar re-mañ o veza deuet a-hed an noz, a gelhias kêr.

15. Paotr an den Doue o veza savet da houlou-deiz, hag o veza eet er-mêz, a welas eun arme war-dro da gêr, hag ar varheien, hag ar hirri : hag eñ e roas da anaoud dezañ, o lavaroud : Allaz, allaz, allaz, va mestr, petra a raim-ni ?

16. Hag eñ a lavaras : N'az-pet ket a aon ; rag muioh a zo ganeom eged ganto.

17. Hag Elizeüs o veza pedet, a lavaras : Aotrou, digor e zaoulagad, evid ma welo. Hag an Aotrou a zigoras daoulagad ar paotr, hag eñ a zellas ; ha setu e welas eur menez leun a gezeg hag a girri-tan war-dro da Elizeüs.

18. Hogen an enebourien a ziskennas etrezeg ennañ ; hag Elizeüs a bedas an Aotrou, o lavaroud : Sko, me az ped, ar bobl-se a zallentez. Hag an Aotrou o skoas a zallentez hervez ger Elizeüs.

19. Hag Elizeüs a lavaras dezo : N'eo ket amañ nag an hent nag ar gêr : deuit war va lerh, ha me a ziskouezo deoh an den a glaskit. Hag eñ o hasas da Samari.

20. Ha pa oent eet e-barz Samari, e lavaras Elizeüs : Aotrou, digor daoulagad ar re-mañ, evid ma welint. Hag an Aotrou a zigoras o daoulagad, hag i a welas penaoz e oant e-kreiz Samari.

21. Ha roue Izrael a lavaras da Elizeüs, pa o gwelas : Ha ne skoin-me ket warnezo, va zad ?

22. Hag eñ a lavaras : Ne skoi ket ; rag n'eh-eus ket o hemeret gand ar hleze ha gand da wareg, evid skei warnezo : hogen laka bara ha dour dirazo, evid ma tebrint ha ma evint, ha ma'z aint etrezeg o aotrou.

23. Lakaet e oe eta dirazo kalz a voued ; hag i a zebras hag a evas ; hag eñ o hasas kuit, hag ez ejont etrezeg o aotrou, ha ne zistrojont mui evel laeron euz ar Siria war douar Izarel.

24. Goude-ze ar Benadad, roue Siria, a strollas e oll arme, a bignas hag a hronnas Samari.

25. Hag eun naonegez vraz a hoarvezas e Samari : hag endra ma oa gronnet, e werzed penn eun azen pevar-ugent pez arhant, hag ar bevare lodenn euz a eur hab⁸⁴ kaoh koulm pemp pez arhant.

26. Ha pa dremenas roue Izrael a-hed ar vur, eur wreg a harmas outañ, o lavaroud : Savete ahanon, aotrou, va roue.

27. Hag eñ a lavaras : An Aotrou ne zavete ket ahanout : a beleh e hellfen-me da zavetei ? Euz al leur, pe euz ar waskell ? Hogen a roue a lavaras c'hoaz dezi : Petra a fell dit ? Hag hi a lavaras :

28. Ar wreg-mañ he-deus lavaret din : Ro da vab, evid ma tebrim anezañ hirio, ha va mab a zebrim warhoaz.

29. Poazet on-eus eta va mab, hag on-eus e zebret. Ha me em-eus lavaret dezi antronoz : Ro da vab, evid ma tebrim anezañ : hogen hi he-deus kuzet he mab.

30. Pa glevas ar roue kement-se, e rogas e zillad hag ez eas a-hed ar vur : hag an oll bobl a welas ar zae-reun a zouge en diabarz war e grohenn.

⁸⁴ eur hab : eur muzul (?).

31. Hag ar roue a lavaras : Ra ray Doue kement-se din hag ouspenn, mar chom hirio penn Elizeüs war e ziskoaz.

32. Hogen Elizeüs a oa azezet en e di, ha tud koz a oa azezet gantañ. Hag ar roue a gasas eun den en e-raog : hag a-barz ma oe deuet ar hannad-se, Elizeüs a lavaras d'ar re goz : Ha gouzoud a rit-hu penaoz ar mab lazer-ze⁸⁵ en-deus kaset evid troha va fenn din ? Gwelit eta, pa zeuy ar hannad, serrit an nor, ha mirit outañ na zeuy e-barz : rag setu trouz treid e aotrou a zeu war e lerh.

33. Pa gomze c'hoaz outo, e oe gwelet ar hannad a zeue etrezeg ennañ. Hag eñ a lavaras : Setu eo braz an droug a zeu deom digand an Aotrou : petra a hedin-me ouspenn digand an Aotrou.

VII. Pennad.

Fonnder braz e Samari diouganet gand Elizeüs.

1. Neuze Elizeüs a lavaras : Selaout ger an Aotrou. Evel-henn e lavar an Aotrou : D'an eur-mañ warhoaz, eur bouezellad vleud a vezo evid eur sikl, ha diou vouezellad heiz evid eur sikl, ouz porz Samari.

2. Unan euz ar re vraz war dorn pehini eh harpe ar roue, a respontas ouz an den Doue hag a lavaras : Ha pa raje an Aotrou paliou⁸⁶ en neñv, hag ar pez a leverez a hellfe beza ? Hag eñ a lavaras : Gand da zaoulagad e weli, hogen ne zebri ket euz an dra-ze.

3. Hogen bez' ez oa pevar den lovr e-tal ar porz, pere a lavaras an eil d'egile : Perag e chomom amañ ken na varvim ?

4. Daoust pe ez aim e-barz kêr, e varvim gand an naon ; daoust pe e chomim amañ, e rankim ivez mervel. Deuit eta ha deom da gamp ar Siried : ma espernont ahanom, e vevim ; ha ma fell dezo ol laza, e varvim na mui na mez.

5. Hag i a zavas e-tro ar pardaez evid mond da gamp ar Siried. Ha pa oent da benn kamp ar Siried, ne gavjont den ebed eno.

6. Rag an Aotrou en-doa lakaet da glevoud e kamp ar Siried, trouz kirri ha kezeg, hag enno arme vraz : hag i a lavaras an eil d'egile : Setu roue Izrael en-deus galvet en on eneb roueed an Heteed hag an Ejiptianed, hag i a zeu warnom.

7. Sevel a rejont eta, hag e tehjont e-kreiz an deñvalijenn, hag e lezjont war o lerh er hamp o zeltou, hag o hezeg, hag o azened ; hag i a dehas gand ar c'hoant hepken da zavetei o buhez.

8. Pa oa deuet eta ar re lovr da benn ar hamp, ez ejont en eun telt, hag e tebrjont, hag eh evjont ; hag i a gemeras ahano arhant, hag aour, ha dillad, hag a yeas kuit, hag o huzas : hag i a yeas en eun telt all, hag a guzas ivez ar pez o-doa kemeret eno.

9. Neuze e leverjont an eil d'egile : Ne reom ket mad ; rag an deiz-mañ a zo eun deiz a gelou mad. Mar davom, ha ma ne fell ket deom rei ar helou a-barz ar mintin, e vezim barnet a wall ; deuit, deom, ha room-ni da anaoud e lez ar roue.

10. Ha pa oent deuet da borz kêr, e tanevelljont dezo, o lavaroud : Bet om e kamp ar Siried, ha n'on-eus kavet den ebed eno, hogen hepken kezeg hag azened ha teltou displeget.

⁸⁵ ar mab lazer-ze : mab al lazer-ze.

⁸⁶ paliou : ?

11. Ar borzierien eta a yeas hag a zanevellas e diabarz lez ar roue.

12. Ar roue a zavas e-kreiz an noz hag a lavaras d'e zervijerien : Me a lavar deoh petra o-deus greet ar Siried deom. Gouzoud a reont penaoz ema an naonegez ganeom, ha dre ze int eet er-mêz euz o hamp, hag int en em guzet er parkeier, o lavaroud : Pa vezint deuet er-mêz euz a gêr, e kemerim anezo ez-veo, ha neuze e hellim mond e kêr.

13. Hogen unan euz e zervijerien a respontas : Kemerom ar pemp marh a zo chomet e kêr (rag n'eus mui nemeto euz an niver braz a oa en Izrael, ar re all o veza bet deuet da get), ha kasom i da spia.

14. Kemeroud a rejont eta daou varh, hag ar roue a gasas da gamp ar Siried, o lavaroud : It ha gwelit.

15. Ar re-mañ a yeas eta war o lerh beteg ar Jourdan ; ha setu an oll hent a oa leun a zillad hag a listri a oa bet taolet gand ar Siried en o reustl : hag ar gannaded a zistroas, hag a zanevellas d'ar roue.

16. Hag ar bobl a yeas er-mêz, hag a breizas kamp ar Siried : hag eur bouezellad vleud a oe roet evid eur sikl, hervez ger an Aotrou.

17. Hogen ar roue en-doa lakaet ouz ar porz an duk-se war dorn pehini eh harpe : flastret e oe gand an engroez en nor borz, hag e varvas hervez m'en-doa lavaret an den Doue, pa oa diskennet ar roue d'e gavoud.

18. Hag e c'hoarvezas evel m'en-doa komzet an den Doue ouz ar roue, o lavaroud : Diou vouezellad heiz a vezo evid eur sikl, hag eur vouezellad vleud evid eur sikl, d'an eur-mañ warhoaz ouz porz Samari.

19. Ha pa respontas an duk-se d'an den Doue, ha pa lavaras : Ha pa raje an Aotrou paliou en neñv, hag ar pezh a leverez a hellfe beza ? E lavaras dezañ : Gand da zaoulagad e weli, hogen ne zebri ket euz an dra-ze.

20. C'hoarvezoud a reas eta gantañ evel ma oa bet diouganet ; flastret e oe agand ar bobl en nor borz, hag e varvas.

VIII. Pennad.

Elizeüs a ziougan maro Benadad, roue Siria, ha ren Hazael.

1. Neuze Elizeüs a gomzas ouz ar wreg a behini en-doa dasorhet ar mab, o lavaroud : Sao, ha kee, te ha da di, ha kerz el leh ma helli chom : rag an Aotrou en-deus galvet an naonegez, hag hi a zeuy war ar vro e-pad seiz vloaz.

2. Houmañ a zavas, hag a reas evel m'en-doa lavaret an den Doue. Hag o veza eet kuit gand he zi, ez eas da chom e bro ar Filistined e-pad pell amzer.

3. Hag a-benn ar seiz vloaz e tistroas ar wreg euz a vro ar Filistined : hag hi a yeas da gavoud ar roue diwar-benn he zi, ha diwar-benn he farkou.

4. Hogen ar roue a oa o komz ouz Giezi, paotr an den Doue, o lavaroud : Lavar din an oll vuzudou en-deus greet Elizeüs.

5. Ha pa zanevelle d'ar roue e pe zoare en-doa dasorhet eun den maro, ar wreg a behini en-doa dasorhet ar mab, a zeuas hag a harmas ouz ar roue diwar-benn he zi, ha diwar-benn he farkou. Ha Giezi a lavaras : Aotrou va roue, setu amañ ar wreg-se, hag hemañ eo he mab, a zo bet dasorhet gand Elizeüs.

6. Hag ar roue a reas goulennou ouz ar wreg ; hag hi a zanevellas dezañ. Hag

ar roue a roas dezi eur spaz⁸⁷, o lavaroud : Distaol dezi kement a zo dezi, hag oll leve he farkou, abaoe ma he-deus kuitaet ar vro bete-vremañ.

7. Elizeüs a zeuas ivez da Zamas, ha Benadad, roue Siria, a oa klañv. Ha danevellet e oe dezañ, o lavaroud : An den Doue a zo deuet amañ.

8. Hag ar roue a lavaras da Hazael : Kemer ganez roou, ha kee war arbenn an den Doue ; ha goulenn kuzul digand an Aotrou drezañ, o lavaroud : Ha me a hello sevel euz ar hleñved-mañ ?

9. Hazael a yeas eta war e arbenn, ha gantañ roou, kement a oa a vad e Damas, samm daou-ugent kañval. Ha pa oa deuet dirazañ, e lavaras : Benadad, roue Siria, da vab en-deus va haset etrezeg ennout, o lavaroud : Ha me a hello distrei yah euz ar hleñved-mañ ?

10. Hag Elizeüs a lavaras dezañ : Kee, ha lavar dezañ : Yac'haad a ri ; koulskoude an Aotrou en-deus diskouezet din penaoz e varvo.

11. Hag eñ a chomas en e zav gantañ, hag a oe ker strafuillet ma her gweled war e zremm ; hag an den Doue a skuillas daelou.

12. Hag Hazael a lavaras dezañ : Perag e ouel va aotrou ? Hag eñ a lavaras : O veza ma ouzon an droug a ri da vugale Izrael. O hêriou-kreñv a loski gand an tan, hag o zud yaouank a lazi gand ar hleze, hag o bugaligou a friki, hag ar gwragez bragez a ziframmi.

13. Hag Hazael a lavaras : Piou on-me, me, eur hi, da zervijer, evid ober eun dra ker braz ? Hag Elizeüs a lavaras : An Aotrou en-deus diskouezet din penaoz e vezi roue war ar Siria.

14. Hag hemañ a yeas kuit diouz Elizeüs hag a yeas etrezeg e aotrou, pehini a lavaras dezañ : Petra en-deus lavaret dit Elizeüs ? Hag eñ a lavaras : Lavaret en-deus din penaoz e tistroi d'az yehed.

15. Antronoz Hazael a gemeras eur pallenn a hlebias gand dour, hag a ledas war e zremm ; hag ar roue o veza maro, Hazael a renas en e leh.

16. Ar pempved bloaz euz a Joram, mab Ac'hab, hag euz a Jozafat, roue Juda, e renas Joram, mab Jozafat, roue Juda.

17. Daou vloaz ha tregont en-doa pa zeuas da reni ; hag eiz vloaz e renas e Jeruzalem.

18. Hag eñ a gerzas e heñchou roueed Izrael, evel m'en-doa kerzet ti Ac'hab : rag e wreg a oa merh da Ac'hab, hag eñ a reas ar pez a zo droug dirag an Aotrou.

19. Hogen ne fellas ket d'an Aotrou koll a-grenn Juda, en abeg da Zavid e zervijer, hervez ar ger en-doa roet dezañ, penaoz e roje dezañ eur houlaouenn, ha d'e vugale da viken.

20. En e zeiziu en em dennas Edom euz a-zindan dorn Juda, hag e lakaas eur roue warnezañ e-unan.

21. Hogen Joram a zeuas da Zeira, ha gantañ e oll girri ; hag eñ a zavas diouz an noz, hag a skoas war an Idumeed pere o-doa e gelhiet, ha war briñsed e girri ; hag ar bobl-se a dehas en he zeltou.

22. Edom eta en em dennas euz a-zindan dorn Juda, evel ma eo chomet beteghenn. Neuze en em dennas ivez Lobna en heveleb amzer.

23. Oberiou all Joram, ha kement en-deus greet, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Juda ?

24. Ha Joram a gouskas gand e dadou, hag e oe beziet ganto e kêr David ; hag Oc'hozias, e vab, a renas en e leh.

⁸⁷ eur spaz : unan bet spazet, eur spazad.

25. En daouzegved bloaz euz a Joram, mab Ac'hab, roue Izrael, e renas Oc'hozias, mab Joram, roue Juda.

26. Daou vloaz warn-ugent en-doa Oc'hozias pa zeuas da reni ; hag eur bloaz e renas e Jeruzalem : e vamm a oa anvet Atalia, merh Anori, roue Izrael.

27. Hag eñ a gerzas e heñchou ti Ac'hab : hag eñ a reas ar pezh a zo droug dirag an Aotrou, evel ti Ac'hab ; rag mab-kaer e oa da di Ac'hab.

28. Kerzoud a reas ivez gand Joram, mab Ac'hab, evid brezekellaad ouz Hazael, roue Siria, e Ramot-Galaad, hag ar Siried a hloazas Joram.

29. Hag eñ a zistroas da Jezrahel evid beza yac'haet ; rag ar Siried o-doa e hloazet e Ramot pa vrezellekae ouz Hazael, roue Siria. Hag Oc'hozias, mab Joram, roue Juda, a zsikennas da weloud Joram, mab Ac'hab, e Jezrahel, pehini a oa klañv eno.

IX. Pennad.

Jehu lakaet da roue war Izrael. Jezabel debret gand ar chas.

1. Hogen Elizeüs, ar profed, a halvas unan euz a vibien ar brofeded, hag a lavaras dezañ : Laka eur gouriz war da zargreiz, ha kemer ar fiolennig eoul-mañ⁸⁸ en da zorn, ha kee da Ramot-Galaad.

2. Ha pa vezi deuet eno, e weli Jehu, mab Jozafat, mab Namsi : ha pa vezi eet en ti, e tenni anezañ euz a-greiz e vreudeur, hag hel liki da vond en eur gambr distro.

3. Hag o kemeroud ar fiolennig eoul, e skuilli war e benn, hag e liviri : Evel-henn e lavar an Aotrou : Da eouliet em-eus da roue war Izrael. Hag e tigori an nor, hag e tehi, ha ne chomi ket eno.

4. Paotr yaouank ar profed a yeas eta da Ramot-Galaad.

5. Hag eñ a yeas e-barz : hogen priñsed an arme a oa azezet, hag eñ a lavaras : Eur ger em-eus da lavaroud dit, o ! priñs. Ha Jehu a lavaras : Da behini ahanom oll ? Hag eñ a lavaras dezañ : Dit, o ! priñs.

6. Hag hemañ a zavas hag a yeas en eur gambr ; hag ar paotr yaouank a skuillas an eoul war e benn, hag a lavaras dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou, Doue Izrael : Da eouliet em-eus da roue war Izrael, pobl an Aotrou.

7. Dispenna a ri ti Ac'hab, da aotrou ; ha me a veñjo gwad ar brofeded, va zervijerien, ha gwad oll zervijerien an Aotrou, euz a zorn Jezabel.

8. Gwasta a rin oll di Ac'hab ; hag e lazin euz a di Ac'hab beteg al loened ; beteg an hini bihan a zalhed kloz, hag an disterra euz a Izrael.

9. Ha me a lakay ti Ac'hab, evel ti Jeroboam, mab Nabat, hag evel ti Baas, mab Abia.

10. Ar chas a zebro ivez Jezabel e park Jezrahel, ha ne vezo den evid he bezia. Hag eñ a zigoras an nor, hag a dehas kuit.

11. Hogen Jehu a zistroas etrezeg servijerien e aotrou ; hag i a lavaras dezañ : Hag ervad ema pep tra ? Da betra eo deuet an diskiant-se d'az kavoud ? Hag eñ a lavaras dezo : C'hwi a anavez an den, hag ar pezh en-deus lavaret din.

12. Hag i a lavaras dezañ : E neb kiz, hogen kentoh danevell eñ deom. Hag eñ a lavaras dezo : Evel-henn hag evel-henn en-deus komzet ouzin, hag en-deus

⁸⁸ ar fiolennig eoul-mañ : galleg. ar fiolennadig eoul : an orselad eoul.

lavaret : Evel-henn e lavar an Aotrou : Da eouliet em-eus da roue war Izrael.

13. Hag i a hastas, ha pep hini anezo o kemeroud e zae he lakaas dindan e dreid e doare eun tron ; hag i a zonas gand ar horn-boud, hag a lavaras : Jehu eo or roue.

14. Jehu eta, mab Jozafat, mab Namsi, en em zavas a-eneb Joram ; hogen Joram a stourme ouz Ramot-Galaad, eñ hag Izrael oll, a-eneb Hazael, roue Siria ;

15. Hag eñ a oa distroet evid en em yac'haad e Jezrahel, euz ar gouliou a oa bet greet dezañ gand ar Siried, pa stourme ouz Hazael, roue Siria. Ha Jehu a lavaras : Mar kavit mad, n'ez ay den er-mêz euz a gêr, gand aon n'ez aje da gas kelou da Jezrahel.

16. Ha Jehu a bignas, hag a yeas etrezeg Jezrahel : hogen Joram a oa klañv eno, hag Oc'harzias, roue Juda, a oa diskennet evid gweloud Joram.

17. Hogen an eveziad a oa war douar Jezrahel, a welas Jehu o tond gand e arme, hag eñ a lavaras : Eun arme a welan. Ha Joram a lavaras : Kemer eur harr, ha kas eñ etrezeg an dud-se, ha ra vezo lavaret dezo : Hag ervad ez a pep tra ?

18. An hini a oa pignet war ar harr a yeas eta etrezeg Jehu, hag a lavaras dezañ : Evel-henn e lavar ar roue : Hag e peoh ema pep tra ? Ha Jehu a lavaras : Petra a zo etre te hag ar peoh ? Tremen, ha kee war va lerh. An eveziad e roas da anaoud, o lavaroud : Ar hannad a zo eet etrezeg enno, ha n'eo ket distroet.

19. Kas a reas Joram eun eil karr, evid mond etrezeg Jehu, hag evid lavaroud dezañ : Evel-henn e lavar ar roue : Hag ar peoh a zo ? Ha Jehu a lavaras : Petra a zo etre te hag ar peoh ? Tremen, ha kee war va lerh.

20. Hogen an eveziad e roas da anaoud, o lavaroud : Eet eo etrezeg enno, ha n'eo ket distroet. E gerz a zo evel kerz Jehu, mab Namsi ; rag buan e kerz.

21. Ha Joram a lavaras : Sternit va harr. Hag i a sternas e garr ; ha Joram, roue Izrael, hag Oc'hozias, roue Juda, a yeas pep hini en e garr, etrezeg Jehu, hag a gavas anezañ e park Nabot, ar Jezrahel.

22. Ha pa welas Joram Jehu, e lavaras dezañ : Ha peoh a zo, Jehu ? Hag eñ a lavaras : Pevez peoh, endra ma pad c'hoaz gadalieziou da vamm Jezabel, hag heh oll strobinele ?

23. Ha Joram a drais e zorn, hag o tehoud e lavaras da Oc'hozias : Trubaderez, Oc'hozias.

24. Hogen Jehu a stegnas e wareg en e zorn, hag a skoas gand Joram etre e ziskoaz. Ar zaez a dreuzas e galon, ha raktal e kouezas maro en e garr.

25. Ha Jehu a lavaras da Vadaser, unan euz e ofiserien : Kemer eñ, ha taol eñ e park Nabot ar Jezrahel : rag koun em-eus penaoz, pa edom on-daou azezet en eur harr o vond war-lerh Ac'hab e dad, an Aotrou en-deus savet ar beh-mañ warnezañ, o lavaroud :

26. En abeg da wad Nabot, ha da wad e vibien, am-eus gwelet hirio, eme an Aotrou, e tistaolin dit er park-mañ, eme an Aotrou. Bremañ eta kemer eñ, ha taol eñ er park, hervez ger an Aotrou.

27. Pa welas Oc'hozias, roue Juda, kement-se, e tehas dre hent ti ar garz⁸⁹ ; ha Jehu a yeas war e lerh, hag a lavaras : Skoit ivez gand hemañ en e garr ; hag i a skoas gantañ e kreh Gaver, a zo war harz Jeblaam : hag eñ a dehas etrezeg Mageddo hag a varvas eno.

28. Hag e zervijerien o veza e lakaet war e garr, a zougas anezañ da Jeruzalem : hag i a vezias anezañ gand e dadou e kêr David.

⁸⁹ ar garz : ? Marteze "al liorz".

29. En unnegved bloaz euz a Joram, mab Ac'hab, e renas Oc'hozias war Juda.
30. Ha Jehu a zeuas da Jezrahel : hogen Jezabel o veza klevet penaoz e teue, a livas he daoulagad gand liou du, a ginklas he fenn, hag a zellas dre ar prenest,
31. Ouz Jehu pehini a oa ouz porz kêr, hag e lavaras : Hag ar peoh a hell beza euz a Zambri, pehini en-deus lazet e aotrou ?
32. Ha Jehu a zavas e benn war-zu ar prenest hag a lavaras : Piou eo hounnez ? Ha daou pe dri spaz a stouas outañ.
33. Hag eñ a lavaras dezo : Taolit hi d'an traoñ. Hag i he zaolas ; hag ar voger a oe glebiet gand he gwad, ha treid ar hezeg a vahas anezi.
34. Ha pa oe deuet e-barz evid debri hag eva, e lavaras-eñ : It ha gwelit ar wreg villiget-se, ha likit hi er bez ; rag merh eur roue eo.
35. Ha pa'z ejont evid he bezia, ne gavjont nemed ar hlopenn, an treid, ha bleñchou an daouarn.
36. Hag i a zistroas hag a zanevellas kement-se dezañ. Ha Jehu a lavaras : Ger an Aotrou eo, pa en-deus komzet dre henou Elias, an Tesbit, e zervijer, o lavaroud : E park Jezrahel e tebro ar chas kig Jezabel.
37. Ha kig Jezabel a vezo e park Jezrahel evel an teil war horre an douar, en heveleb doare ma lavarou an dremenidi : Hag hounnez eo ar Jezabel-ze ?

X.Pennad.

Jehu a laka da laza mibien Ac'hab ha breudeur Oc'hozias.

1. Hogen Ac'hab en-doa deg mab ha tri-ugent e Samari : ha Jehu a skrivas liziri, hag o hasas da Zamari, d'ar re genta euz a gêr, ha d'an henaoured, ha da vagerien Ac'hab, o lavaroud :
2. Kerkent ha ma vezo deuet al liziri-mañ deoh, c'hwi pere hoh-eus mibien hoh aotrou, ha kirri, ha kezeg, ha kêriou-kreñv, hag armou ;
3. Dilennit ar gwella, hag an hini a blijo deoh e-touez mibien ho mestr, ha likit eñ war dron e dad, ha stourmit evid ti hoh aotrou.
4. Hag i a oe spontet-braz, hag e leverjont : Setu daou roue ha n'o-deus ket gallet harpa outañ ; penaoz e hellfem-ni enebi ?
5. Mistri an ti, ha pennou kêr, hag an henaoured, hag ar vagerien, a gasas eta etrezeg Jehu, o lavaroud : Da zervijerien om, kement a hourhemenni a raim, ne lakaim ket a roue warnom ; gra ar pez a giri.
6. Hogen eñ a skrivas liziri all dezo, o lavaroud : Mar demaoh din, ha mar sentit ouzin, kemerit pennou mibien hoh aotrou, ha deuit warhoaz d'am havoud d'an eur-mañ e Jezrahel. Hogen an deg mab ha tri-ugent ar roue⁹⁰ a oa maget e tiez ar re genta euz a gêr.
7. Ha pa zeuas al liziri dezo, e kemerjont an deg mab ha tri-ugent ar roue, hag e lzajont anezo ; hg o veza lakaet o fennou e kestou, e kasjont anezo da Jehu e Jezrahel.
8. Hoigen eur hannad a zeuas, hag a zanevellas, o lavaroud : Degaset o-deus pennou mibien ar roue. Hag eñ a lavaras : Likit o e daou vern e-tal ar porz beteg ar mintin.
9. Pa oe deuet ar mintin, ez eas er-mêz, hag o chom en e zav, e lavaras d'an

⁹⁰ an deg mab ha tri-ugent ar roue : euz ar roue.

oll bobl : Tud wirion oh : mar don en em zavet a-eneb va aotrou, ha ma em-eus e lazet, piou en-deus lazet ar re-mañ oll ?

10. Sellit eta bremañ penaoz n'eus kouezet ger ebed euz an Aotrou d'an douar, euz a gement en-doa lavaret an Aotrou diwar-benn ti Ac'hab, ha penaoz en-deus greet an Aotrou ar pez en-doa lavaret dre henou Elias, e zervijer.

11. Jehu eta a lazas kement hini a oa chomet euz a di Ac'hab e Jezrahel, hag e oll briñsed, hag e vignoned, hag e veleien, ken na chomas hini anezo.

12. Hag eñ a zavas, hag a zeuas da Zamari : ha pa oe deuet war harz loj ar vesaerien war an hent,

13. E kavas breudeur Oc'hozias, roue Juda, hag e lavaras dezo : Piou oh-hu ? Hag i a lavaras : Ni a zo breudeur Oc'hozias, hag e tiskennom evid saludi mibien ar roue, ha mibien ar rouanez.

14. Ha Jehu a lavaras : Kemerit o ez-veo. Ha pa o-doe o hemeret ez-veo, e lazjont anezo er puñs dizour a oa e-harz al loj, hag i daou-ugent den, heb ma⁹¹ chomas beo hini anezo.

15. Ha pa oe eet kuit ahano, e kavas Jonadab ; mab Rec'hab, a zeue war e arbenn ; hag eñ a zaludas anezañ, hag a lavaras dezañ : Ha reiz eo da galon en da-geñver-te ? Ha Jonadab a lavaras : Bez' ez eo. Mar deo, emezañ, ro da zorn din. Hag eñ a roas e zorn dezañ. Ha Jehu a lakaas anezañ da bigna en e garr.

16. Hag e lavaras dezañ : Deus ganen, ha gwel va oaz e-keñver an Aotrou. Hag o veza e lakaet war e garr,

17. E kasas anezañ da Zamari. Hag eñ a lakaas laza an ar re oll euz a di Ac'hab a oa chomet e Samari, beteg an diweza, hervez ar ger en-doa lavaret an Aotrou dre henou Elias.

18. Jehu eta a zastumas an oll bobl, hag a lavaras dezo⁹² : Ac'hab en-deus enoret Baal eun nebeud, hogen me a enoro anezañ muioh.

19. Galvit eta d'am havoud oll brofeded Baal, hag e oll zervijerien, hag e oll veleien. Na chomet hini heb dond, rag eur sakrifis braz a rin da Vaal : piou bennag ha na zeuy ket, a vezo kaset d'ar maro. Hogen Jehu a ree kement-se dre douellerez, evid kolla azeulerien Baal.

20. Hag eñ a lavaras : Lidit eur gouel da Vaal.

21. Hag eñ a gasas dre oll harzou Izrael, evid gervel oll zervijerien Baal ; ha ne chomas hini heb dond. Hag i a yeas e templ Baal ; ha ti Baal a oe leun euz an eil penn d'egile.

22. Hag eñ a lavaras d'ar re vire ar gwiskamañchou : Degasit gwiskamañchou da oll zervijerien Baal. Hag i a zegasas gwiskamañchou dezo.

23. Ha Jehu o veza eet e-barz templ Baal, gand Jonadab, mab Rec'hab, a lavaras da azeulerien Baal : Enklaskit ha gwelit, ma⁹³ ne ve ket ganeoh unan bennag euz a zervijerien an Aotrou, hogen servijerien Baal hepken.

24. Mond a rejont neuze e-barz evid benniga viktimou ha sakrifisou-losk. Hogen Jehu en-doa lakaet er-mêz pevar-ugent den, da bere en-doa lavaret : Mar teh unan euz an dud-se a zegasin etre ho taouarn, ho puhez a vezo evid e vuhez.

25. Pa oe eta benniget ar sakrifis-losk, Jehu a roas ar gourhemenn-mañ d'e vrezilidi ha d'e ofiserien : It e-barz ha lazit o, ha na dehet hini anezo : hag i o lazas gand ar hleze ; hag ar vrezilidi gand an ofiserien a daolas anezo er-mêz : hag i a yeas e kêr templ Baal,

⁹¹ ma : na.

⁹² dezo : tud ar bobl.

⁹³ ma : ha.

26. Hag a dennas euz an templ skeudenn Baal, hag a zevas anezi.
27. Ha goude m'o-doe he diskaret, e kasjont ivez da get ti Baal, hag e rejont kah-lehiou⁹⁴ en e leh, beteg-henn.
28. Jehu eta a gasas kuit Baal euz a Izrael.
29. Koulskoude ne zilezas ket pehejou Jeroboam, mab Nabat, pehini en-doa lakaet Izrael da behi, ha ne bellaas ket diouz al leueou aour a oa e Betel hag e Dan.
30. Hag an Aotrou a lavaras da Jehu : O vez ma eh-eus greet gand preder ar pez a oa reiz hag a oa mad dirag va daoulagad, ha ma eh-eus greet a-eneb ti Ac'hab kement em-boa em halon : da vibien beteg ar bederved lignez a vezo azezet war dron Izrael.
31. Hoigen Jehu en gerzas ket bepred e lezenn an Aotrou, Doue Izrael, a-greiz e galon ; ha ne dehas ket diouz pehejou Jeroboam, pehini en-doa lakaet Izrael da behi.
32. En deziou-ze e teuas an Aotrou d'en em skuiza diwar-benn Izrael ; hag Hazael a drehas anezo e oll harzou Izrael,
33. Adaleg ar Jourdan war-zu ar sav-heol, e oll vro Halaad, hag e Gad, hag e Rubeu, hag e Manase, adaleg Aroer, a zo war froud Arnon, hag e Galaad, hag e Basan.
34. Oberiou all Jehu, ha kement en-deus greet, hag e nerz, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?
35. Ha Jehu a gouskas gand e dadou ; hag i a vezias anezañ e Samari : ha Joac'has, e vab, a renas en e leh.
36. An deziou e-pad pere e renas Jehu war Izrael e Samari, a oe euz a eiz vloaz warn-ugent.

XI.Pennad.

Joas a zo lakaet war an tron.

1. Atalia, mamm Oc'hozias, o weloud penaoz e oa maro he mab, a zavas hag a lazaz oll ouenn ar roue.
2. Hogen Josaha, merh ar roue Joram, c'hoar Oc'hozias, a gemeras Joas, mab Oc'hozias, hag a laeras anezañ euz a-greiz mibien ar roue a lazed, ha gantañ e vagerez a oa en e gambr : hag i e guzas diouz gwel Atalia, evid na vije ket lazec.
3. Hag eñ a oa kuzet ganti e-pad c'hweh vloaz e ti an Aotrou ; hogen Atalia a rene war ar vro.
4. Koulskoude er seizved bloaz, Joiada a gasas ; hag eñ o kemeroud kantenerien ha soudarded, o lakaas da zond etrezeg ennañ e ti an Aotrou, hag e reas kevredigez ganto : hag o veza o lakaet da doui e ti an Aotrou, e tiskouezas dezo mab ar roue.
5. Hag e hourhemennas dezo, o lavaroud : Setu amañ ar pez a dleit da ober.
6. Ra'z ay an drede lodenn ahanoh e sizun⁹⁵, ra ziwallo ti ar roue. Ra'z ay eun drede lodenn all ouz porz Sur : ha eun drede lodenn all ouz ar porz a zo a-dreñv ti an dirennerien⁹⁶ : hag e tiwallot ti Mesa.

⁹⁴ kah-lehiou : poullou-brein.

⁹⁵ e sizun : ? Marteze : e deiz ar sabbat.

⁹⁶ an dirennerien : ?

7. Hogen diou lodenn ahanoh, euz ar re a zeuy er-mêz euz a zizun⁹⁷, diwallent ti an Aotrou war-dro d'ar roue.

8. Ha c'hwi en em zalho war e dro, gand hoh armou en ho taouarn ; ha mar da eur re e kloz an templ, ra vezo lazet : ha c'hwi a vezo gand ar roue pa'z ay e-barz ha pa'z ay er-mêz.

9. Ar gantenerien a reas kement en-doa gourhemennet dezo Joiada ar beleg-braz ; hag i o kemeroud o oll dud, ar re a zeue e sizun⁹⁸, hag ar re a zeue er-mêz euz a zizun, hag ar re a zeue er-mêz euz a zizun, a zeuas da gavoud Joiada ar beleg-braz,

10. Pehini a roas dezo goafiou hag armou ar roue David, a oa e ti an Aotrou.

11. Ha pep hini a zavas gand e armou en e zorn, adaleg an tu dehou euz an templ, beteg an tu kleiz euz an aoter hag euz an ti, war-dro d'ar roue.

12. Hag eñ a gasas dirazo mab ar roue, hag a lakaas warnezañ ar gurunenn hag an testeni : hag i hel kaaas da roue, hag a eoulias anezañ : hag o stlaka gand o daouarn, e leverjont : Ra vevo ar roue.

13. Hogen Atalia a glevas trouz ar bobl a rede ; hag o veza eet e-kreiz an engroez e templ an Aotrou,

14. E welas ar roue azezet war an tron hervez ar hiz, hag ar ganerien hag ar gornerien en e gichenn, hag oll bobl ar vro el levez, hag o seni gand ar horn. Hag hi a rogas he dillad, hag a harmas : Dispah, dispah.

15. Hogen Joiada a hourhemennas d'ar ganterien a oa e penn an arme, hag a lavaras dezo : Kasit hi er-mêz euz an templ, ha piou bennag a'z ay war he herh-hi, ra vezo lazet gand ar hleze. Rag ar beleg en-doa lavaret : Na vezet ket lazet hi e templ an Aotrou.

16. Hag hi a lakaas he daouarn warnezi, hag o veza he haset dre nerz dre hent ar hezeg e-harz ti ar roue, he lazjont eno.

17. Ha Joiada a reas kevredigez etre an Aotrou, hag ar roue, hag ar bobl, evid ma vije pobl an Aotrou, hag etre ar roue hag ar bobl.

18. Hag oll bobl ar vro a yeas e templ Baal, a ziskaras e aoteriou, hag a dorras e skeudennou ; laza a rejont ivez Matan, beleg Baal, dirag an aoter. Hag ar beleg-braz a lakaas gwarded e ti an Aotrou.

19. Hag eñ a gemeras ar gantenerien, ha soudarded ar Seretied hag ar Feletied, hag oll bobl ar vro ; hag i a dennas ar roue er-mêz euz a di an Aotrou : hag e teujont dre hent dor an dirennerien e ti ar roue, hag eñ a azezas war tron ar roueed.

20. Hag oll bobl ar vro en em laouennaas, ha kêr a oe e peoh ; hogen Atalia a oe lazet e ti ar roue,

21. Ha Joas en-doa seiz vloaz, pa zeauas da reni.

XII. Pennad.

Joas a laka aoza an templ. Maro Joas.

1. Er seizved bloaz Jehu, e renas Joas, hag eñ a renas daou-ugent vloaz e Jeruzalem. E vamm a oa anvet Sebia, euz a Versabe.

2. Ha Joas a reas ar mad dirag an Aotrou e-pad an oll zeiziu ma oe kelennet

⁹⁷ euz a zizun : euz ar sabbat.

⁹⁸ sizun : sabbat.

gand Joiada ar beleg-braz.

3. Koulskoude ne dennas ket al lehiou uhel : hag ar bobl a ginnige c'hoaz viktimou, hag a zave ezañs el lehiou uhel.

4. Ha Joas a lavaras d'ar veleien : Oll arhant an traou sakr a vezo degaset da di an Aotrou gand ar re a dremeno ugent vloaz⁹⁹ ; pe a vezo kinniget evid gwerz an ene, pe o veza degaset ad di an Aotrou a galon hag a youl vad ;

5. Ra vezo kemeret gand ar veleien, pep hini hervez e reiz, ha ra aozint-i ti an Aotrou, e pe leh bennag e welint e vezo red e aoza.

6. Hogen ar veleien n'o-doa ket aozet an templ beteg an trede bloaz warn-ugent euz ar roue Joas.

7. Hag ar roue Joas a halvas Joiada, ar beleg-braz, hag ar veleien all, hag a lavaras dezo : Perag ne aozit-hu ket an templ ? Na gemerit ket eta mui a arhant, hogen distaolit eñ evid aoza an templ.

8. Divennet e oe eta oh ar veleien na germerjent arhant digand ar bobl, ha na aozajent ti an Aotrou.

9. Ha Joiada ar beleg-braz a gemeras eur houfr, hag a reas eun toull war e horre, hag a lakaas anezañ ouz an aoter en tu dehou d'ar re a zeue e ti an Aotrou ; hag ar veleien a oa o tiwall arhant a oe degaset da di an Aotrou.

10. Ha pa welent penaoz e oa kalz a arhant er houfr, skrivagner ar roue, hag ar beleg-braz, a bigne, hag i a denne hag a nivere an arhant en em gave e ti an Aotrou.

11. Hag i a lakaas an arhant, hervez an niver hag ar pouez, etre daouarn ar re a oa e penn labourerien ti an Aotrou : hag ar re-mañ a roe lod d'ar gilvizien, ha lod d'ar vañsonerien a laboure e ti an Aotrou.

12. Hag i a aoze an ti ; hag evid ar re a vene ar vein ; hag evid prena koad ha mein da gompiza evid peuraeza ti an Aotrou, e kement en-doa ezomm.

13. Koulskoude ne reed ket gand an arhant-se a gased d'an templ, listri ti an Aotrou, hag ar ferierigou¹⁰⁰, hag an ezañsouerou, hag ar hornou-boud, hag an oll listri aour hag arhant.

14. Ha rei a reed d'ar re a laboure evid aoza ti an Aotrou.

15. Ha ne houlennet ket a gont digand an dud da bere e oa roet an arhant evid e lodenna etre al labourerien, hogen gand fealded e lodennet anezañ.

16. Ne zouged ket e ti an Aotrou an arhant evid ar gwallou, hag an arhant evid ar pehejou ; rag d'ar veleien e oa.

17. Neuze Hazael, roue Siria, a bignas hag a stourmas ouz Get hag a gemeras anezi : hag eñ a droas evid pigna da Jeruzalem.

18. Rag se, Joas, roue Juda, a gemeras an oll draou sakr o-doa kinniget Jozafat, ha Joram, hag Oc'hozias, e dadou ha roueed Juda, hag ar re en-doa kinniget e-unan ; hag an oll arhant a hellas da gavoud e teñzoriou ti an Aotrou, hag e ti ar roue : hag eñ o hasas da Hazael, pehini a bellaas diouz Jeruzalem.

19. Oberiou all Joas, ha kement en-deus greet, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Juda ?

20. Hiogen e zervijerien a zavas hag a zispahas etrezo, hag a lazias Joas e ti Mello, d'an diskenn euz a Zelia.

21. Ha Josac'har, mab Semaat, ha Jozabad, mab Somer, e zervijerien, a skoas gantañ hag a lazias anezañ : hag i a vezias anezañ gand e dadou e kêr David ; hag Amasias, e vab, a renas en e leh.

⁹⁹ ugent vloaz : ouspenn ugent vloaz dezo.

¹⁰⁰ ferierigou : forhouigou.

XIII. Pennad.

Maro Elizeüs. Eur horv maro o veza bet taolet en e vez a zav raktal.

1. En trede bloaz warn-ugent euz a Joas, mab Oc'hozias, roue Juda, e renas Joac'haz, mab Nabat, pehini a lakaas Izrael da behi ; ha ne bellaas ket diouto.
2. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, hag a heulias pehejou Jeroboam, mab Nabat, pehini a lakaas Izrael da behi, ha na bellaas ket diouto.
3. Eun droug braz a oa en Aotrou a-eneb Izrael, hag eñ o lakaas etre daouarn Hazael, roue Siria, hag etre daouarn Benadad, mab Hazael, en oll zeiziou-ze.
4. Hogen Joac'haz a bedas dirag an Aotrou, hag an Aotrou a zelaouas anezañ : rag eñ a wealas anken Izrael, ha penaoz e oant gwasket gand roue Siria :
5. Hag an Aotrou a roas eur Salver da Izrael, hag eñ a oe tennet euz a zaouarn roue Siria : ha bugale Izrael a chomas dindan o zeltou evel kent.
6. Koulskoude ne zilezjont ket pehejou ti Jeroboam, pehini en-doa lakaet Izrael da behi ; hogen i a gerzas enno ; hag ar hoad-sakr¹⁰¹ a chomas zoken e Samari.
7. Ha ne oa chomet da Joac'haz euz e bobl nemed hanter-kant marheg ha deg karr, ha deg mil den war droad : rag roue Siria en-doa o zrehet ha brevet evel ar poultr war al leur.
8. Oberiou all Joac'haz, ha kement en-deus greet, hag e nerz, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?
9. Ha Joac'haz a gouskas gand e dadou ; hag i a vezias anezañ e Samari : ha Joas, e vab, a renas en e leh.
10. Er seizved bloaz ha tregont euz a Joas, roue Juda, e renas Joas, mab Joac'haz, war Izrael e Samari, e-pad c'hwezeg vloaz.
11. Hag eñ a reas ar pezh a zo droug dirag an Aotrou : ne bellaas ket diouz pehejou Jeroboam, mab Nabat, pehini a lakaas Izrael da behi ; hogen eñ a gerzas enno.
12. Oberiou all Joas, ha kement en-deus greet, hag e nerz, ha penaoz en-deus stourmet ouz Amasias, roue Juda, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?
13. Ha Joas a gouskas gand e dadou ; ha Jeroboam a azezas war e dron ; ha Joas a oe beziet e Samari gand roueed Izrael.
14. Hogen Elizeüs a oa klañv gand ar hleñved gand pehini eo bet marvet ; ha Joas, roue Izrael, a ziskennas d'e weloud, hag a ouelas dirazañ, o lavaroud : Va zad, va zad, Karr Izrael hag e garrener.
15. Hag Elizeüs a lavaras dezañ : Degas eur wareg ha saeziou. Ha p'en-doa degaset dezañ eur wareg ha saeziou,
16. E lavaras da roue Izrael : Laka da zorn war ar wareg. Ha p'en-doe laket e zorn war ar wareg, e lakaas Elizeüs e zaouarn war daouarn ar roue,
17. Hag e lavaras : Digor ar prenest war-zu ar sav-heol . Ha pa en-doe e zigoret, Elizeüs a lavaras dezañ : Taol eur saez. Hag eñ he zaolas. Hag Elizeüs a lavaras : Saez silvidigez an Aotrou, ha saez silvidigez a-eneb ar Siria ; skei a ri gand ar Siria e ti Afek, ken na gasi anezañ da get.

¹⁰¹ ar hoad-sakr : an idol.

18. Hag eñ a lavaras c'hoaz : Kemer saeziou. Ha pa en-doe o hemeret, e lavaras c'hoaz dezañ : Sko gand eur zaez war an douar ; ha p'en-doe skoet warnezañ teir gwech, ha ma oe ehanet,

19. An den Doue a zavas droug ennañ en e eneb, hag a lavaras : Ma'z-pije skoet pemp gwech, pe c'hweh gwech, pe seiz gwech, ez-pije skoet gand ar Siria beteg he has da get ; hogen bremañ e skoi ganti teir gwech.

20. Hag Elizeüs a varvas, hag i a vezias anezañ. Hogen dond a reas laeron euz a Voab war ar vro er bloaz-se.

21. Hogen eur re bennag a vezie eun den ; ha pa weljont al laeron, e taoljont ar horv maro a bez Elizeüs. Pa skoas ar horv maro ouz eskern Elizeüs, e teuas an den a varo da veo, hag e savas war e dreid.

22. Hazael eta, roue Siria, a heskinas Izrael a-hed oll zeiziou Joac'haz.

23. Hag an Aotrou en-doe truez outo, hag a zistroas outo en abeg d'ar gevredigez en-doa greet gand Abraham, hag Izaak, ha Jakob ; ha ne fellas ket dezañ o has da get, nag o disteurel a-grenn, beteg an amzer-mañ.

24. Hogen Hazael, roue Siria, a varvas. Ha Benadad, e vab, a renas en e leh.

25. Neuze Joas, mab Joac'haz, a gemeras euz e zaouarn Benadad, mab Hazael, ar hêriou en-doa kemeret euz a zaouarn Joac'haz e dad dre wir ar brezel ; Joas e drehas teir gwech hag a zistaolias ar hêriou da Izrael.

XIV. Pennad.

Amasias a laka da vervel ar re o-doa lazet e dad. Lazet eo e-unan gand e dud.

1. En eil bloaz euz a Joas, mab Joac'haz, roue Izrael, e renas Amasias, mab Joas, roue Juda.

2. Pemp bloaz warn-ugent en-doa pa zeuas da reni : hag eñ a renas nao bloaz warn-ugent e Jeruzalem : e vamm a oa euz a Jeruzalem, hag a oa anvet Joadan.

3. Hag eñ a reas ar pezh a oa mad dirag an Aotrou : hogen n'her greas ket evel David e dad ; ober a reas en oll evel Joas e dad :

4. Hogen hepken ne dennas ket al lehiou uhel : rag ar bobl a ginnige c'hoaz sakrifisou hag a zeve ezañs el lehiou uhel.

5. Ha pa oe startaet e ren, e skoas gand ar re euz e zervijerien o-doa lazet e dad.

6. Hogen ne lazas ket bugale ar re o-doa lazet, hervez ar pezh a zo skrivet e levr lezenn Moizez, hag hervez m'en-deus gourhemennet an Aotrou, o lavaroud : Ne varvo ket an tadou evid ar vibien, nag ar vibien evid an tadou, hogen pep hini a varvo evid e behed e-unan.

7. Eñ eo a drehas deg mil euz an Idumeed e traonienn ar poulllou hollen, hag a gemeras eur roh er brezel, a anvas Jektebel, evel ma eo anvet beteg-henn.

8. Neuze Amasias a gasas kannaded da Joas, mab Joac'haz, mab Jehu, roue Izrael, evid lavaroud : Deus hag en em welom an eil egile.

9. Ha Joas, roue Izrael, a gasas goude da Amasias, roue Juda, evid lavaroud : Askol al Liban a gasas d'ar sedr a zo el Liban, evid lavaroud : Ro da verh da wreg d'am mab. Hag al loened gouez a zo e koad al Liban a dremenas hag a flastras an askol.

10. O veza ma eh-eus bet ar gounid war an Idumeed, ha ma eh-eus o zrehet, eo bet stambouhet da galon ; bez laouen gand da hloar hag azez en da di. Perag e

klaskez-te da zroug da-unan, evid ma kouezi-te ha Juda ganez ?

11. Hag Amasias ne aotreas ket ; ha Joas, roue Izrael, a bignas, hag i en em welas an eil egile, eñ hag Amasias, roue Juda, e Betsamez, kêr Juda.

12. Ha Juda a oe trehet dirag Izrael ; hag i a dehas pep hini en e delt.

13. Hogen Joas, roue Izrel, a gemeras e Betsamez Amasias, roue Juda, mab Joas, mab Oc'hozias, hag a gasas anezañ da Jeruzalem ; hag eñ a ziskaras mur Jeruzalem, adaleg porz Efraim beteg porz ar hogn, war-hed pevar-hant ilinad.

14. Hag eñ a gemeras an oll aour hag an arhant, hag an oll listri a oe kavet e ti an Aotrou, hag e teñzoriou ar roue, ha gouestlou ; hag a tistroas da Zamari.

15. Oberiou all Joas, hag an nerz gand pehini e stourmas ouz Amasias, roue Juda, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?

16. Ha Joas a gouskas gand e dadou, hag e oe beziet e Samari e-touez roueed Izrael ; ha Jeroboam e vab a renas en e leh.

17. Hogen Amasias, mab Joas, roue Juda, a vevas pemzeg vloaz goude ma oe maro Joas, mab Joac'haz, roue Izrael.

18. Oberiou all Amasias, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Juda ?

19. Eun dispah a zavas en e eneb e Jeruzalem : hag eñ a dehas da Lac'his. Hag i a gasas tud war e lerh da Lac'his hag a lazas eno anezañ.

20. Hag i a zougas anezañ war e gezeg, hag eñ a oe beziet e Jeruzalem gand e dadou, e kêr David.

21. Hogen oll bobl Juda a gemeras Azarias, pehini en-doa c'hwezeg vloaz, hag i hel lakaas da roue, e leh Amasias, e dad.

22. Eñ eo a zavas Elat hag a zistaolas anezi da Juda, goude ma oe kousket¹⁰² ar roue gand e dadou.

23. Er pemzegved bloaz euz a Amasias, mab Joas, roue Juda, e renas Jeroboam, mab Joas, roue Izrael e Samari ; hag eñ a renas eur bloaz ha daou-ugent.

24. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, ha ne bellaas ket diouz oll behejou Jeroboam, mab Nabat, pehini a lakaas Izrael da behi.

25. Eñ eo reizas harzou Izrael, adaleg bevenn Emat beteg mor ar goueleh, hervez ger an Aotrou, Doue Izrael, en-deus lavaret dre henou e zervijer Jonas, mab Amati, ar profed, pehini a oa euz a Het, a zo e Ofor.

26. Hag an Aotrou a welas glahar Izrael a oa c'hwero-meurbed ; penaoz e oant gwastet oll, hag ar re a oa er vah, ken ar re a oa en dienez ; ha ne oa hini evid kennerza Izrael.

27. Ha ne lavaras ket an Aotrou e vije lamet ano Izrael euz a-zindan an neñv ; hogen eñ o diboanias dre zorn Jeroboam, mab Joas.

28. Oberiou all Jeroboam, ha kement en-deus greet, hag an nerz gand pehini en-deus stourmet, ha penaoz en-deus lakaet da zisteurel da Izrael Damas hag Emat a oa etre daouarn Juda, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?

29. Ha Jeroboam a gouskas gand e dadou, roueed Izrael, ha Zac'harias, e vab, a renas en e leh.

XV. Pennad.

Teglatfalasar a gas da Ziria eul lod braz euz an Izraelited.

¹⁰² kousket : maro eo hag ema gand er bez gand e hendadou.

1. Er seizved bloaz warn-ugent euz a Jeroboam, roue Izrael, e renas Azarias, mab Amasias, roue Juda ;
2. C’hwezeg vloaz en-doa pa zeuas da rena, hag eñ a renas daou vloaz hag hanter-kant e Jeruzalem : e vamm a oa euz a Jeruzalem, hag a oa anvet Jec’helia.
3. Hag eñ a reas ar pezh a blije d’an Aotrou, hervez kement a reas Amasias e dad.
4. Koulskoude ne ziskaras ket al lehiou uhel : ar bobl a ree c’hoaz sakrifisou, hag a zeve ezañs war al lehiou uhel.
5. Hogen an Aotrou a skoas gand ar roue-ze, hag eñ a oe lovr beteg deiz e varo, ha chom a reas e-unan en eun ti distro ; hogen Joatan, mab ar roue, a rene ti ar roue, hag a varne pobl ar vro.
6. Oberiou all Azarias, ha kement en-deis greet, ha n’int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Juda ?
7. Hag Azarias a gouskas gand e dadou : hag i a vezias anezañ gand e hourdadou e kêr David ; ha Joatan, e vab, a renas en e leh.
8. En eizved bloaz ha tregont euz a Azarias, roue Juda, e renas Zac’harias, mab Jeroboam, war Izrael e Samari, e-pad c’hweh miz :
9. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, evel m’o-doa greet e dadou ; ne bellaas ket diouz pehejou Jeroboam, mab Nabat, pehini a lakaas Izrael da behi.
10. Hogen Selleem, mab Jabez, en em zavas en e eneb : eñ a skoas outañ, hag e lazas, hag a renas en e leh.
11. Oberiou all Zac’harias, ha n’int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?
12. Henez eo ger an Aotrou, pa gomzas ouz Jehu, o lavaroud : Da vibien beteg ar pevare rumm a vezo azezet war tron Izrael. Hag evel-se e oe.
13. Selleem, mab Jabez, a zeuas da reni en naved bloaz ha tregont euz a Azarias, roue Juda ; hogen e-pad eur miz e renas e Samari.
14. Ha Manahem, mab Gadi, a bignas euz a Dersa hag a zeuas da Zamari ; hag eñ a skoas ouz gand Selleem, mab Jabez, e Samari, hag a lazas anezañ, hag a renas en e leh.
15. Oberiou all Selleem, hag an dispah dre behini eh aozas spiou, ha n’int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?
16. Neuze Manahem a skoas gand Tapsa, ha gand ar re oll a oa enni, ha gand he harzou beteg Tera, en abeg na oa ket fellet dezo digeri dezañ ; hag eñ a lazas an oll wragez brazez, hag a zigoras o hov dezo.
17. En naved bloaz ha tregont euz a Azarias, roue Juda, Manahem, mab Gadi, a renas war Izrael ; hag eñ a renas deg vloaz e Samari.
18. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou : ne bellaas ket diouz pehejou Jeroboam, mab Nabat, pehini a lakaas Izrael da behi e-pad e oll zeziou.
19. Ful, roue an Asiried, a zeuas er vro, ha Manahem a roas da Ful mil talant arhant evid ma kennerzje anezañ ha ma kreñvaaje e rouantelez.
20. Ha Manahem a zastumas an arhant-se e Izrael war ar re oll-halloudeg ha pinvidig, hanter-kant sikl arhant war pep hini, evid rei da roue an Asiried ; ha roue an Asiried a zistroas, ha ne chomas mui er vro.
21. Oberiou all Manahem, ha kement en-deus greet, ha n’int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?
22. Ha Manahem a gouskas gand e dadou ; ha Faseia, e vab, a renas en e leh.
23. En hanter-kantved bloaz euz a Azarias, roue Juda, e renas Faseia, mab

Manahem, war Izrael e Samari e-pad daou vloaz.

24. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou ; ne bellaas ket diouh pehejou Jeroboam, mab Nabat, pehini a lakaas Izrael da behi.

25. Fasee, mab Romeli, penn e arme, en em zavas en e eneb hag a skoas gantañ e Samari, e tour ti ar roue, e-harz Argob hag Arie, ha gantañ hanter-kant den euz a vibien ar Galaadited ; hag eñ a lazaz anezañ, hag a renas en e leh.

26. Oberiou all Fasee, ha kement en-deus greet, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?

27. En eil bloaz hag hanter-kant euz a Azarias, roue Juda, a renas Fasee, mab Romelo, war Izrael e Samari, e-pad ugent vloaz.

28. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou ; ne bellaas ket diouz pehejou Jeroboam, mab Nabat, pehini a lakaas Izrael da behi.

29. E deziou Fasee, roue Izrael, e teuas Teglatfalasar, roue an Asiried, pehini a gemeras Aion, hag Abelti-Masc'hin, ha Janoe, hag ar Galilea, hag oll vro Neftali ; hag eñ o dezougas en Asiria.

30. Hogen Osee, mab Ela, a zispahas hag a aozas spiou da Fasee, mab Romeli ; hag eñ a skoas gantañ, hag e lazaz ; hag a renas en e leh en ugentved bloaz euz a Joatam, mab Ozias.

31. Oberiou all Fasee, ha kement en-deus greet, ha n'int ket skrivet e levr oberiou roueed Izrael ?

32. En eil bloaz euz a Fasee, mab Romeli, roue Izrael, e renas Jostem, mab Ozias, roue Juda.

33. Pemp bloaz warn-ugent en-doa pa zeuas da reni, hag eñ a renas c'hwezeg vloaz e Jeruzalem ; e vamm 'oa anvet Jerusa, hag a oa merh da Zadok.

34. Hag eñ a reas ar pezh a oa hetuz d'an Aotrou, hag hervez kement en-doa greet Ozias, e dad.

35. Koulskoude ne ziskaras ket al lehiou uhel : ar bobl a ree c'hoaz sakrifisou, hag a zeve ezañs war al lehiou uhel. Eñ eo a zavas an nor uhella euz a di an Aotrou.

36. Oberiou all Joatam, ha kement en-deus greet, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Juda ?

37. En deziou-ze e teuas an Aotrou da gas da Juda Rasin, roue Siria, ha Fasee, mab Romeli.

38. Ha Joatam a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet ganto e kêr David e dad ; hag Ac'haz e vab a renas en e leh.

XVI. Pennad.

Ac'haz en em ro da gehelidigez an idolou.

1. Er seitegved bloaz euz a Fasee, mab Romeli, e teuas Ac'haz, mab Jostam, roue Juda, da reni.

2. Ugent vloaz e oa Ac'haz pa zeuas da reni, hag eñ a renas c'hwezeg vloaz e Jeruzalem ; ne reas ket ar pezh a oa mad dirag an Aotrou, e Zoue, evel David e dad ;

3. Hogen kerzoud a reas e heñchou rouanez Izrael : hag ouspenn e ouestlas e vab, oh e lakaad e-kreiz an tan, hervez idolatri ar broadou en-doa bevezet an Aotrou dirag bugale Izrael.

4. Laza a reas ivez viktimou, hag e teve ezañs war al lehiou uhel, ha war ar hrehiou, ha dindan ar gwez delienneg.

5. Neuze e pignas Rasin, roue Siria, ha Fasee, mab Romeli, roue Izrael, evid stourmi ouz Jeruzalem : ha petra bennag ma strobent anezañ, ne helljont ket e drehi.

6. En amzer-ze Rasin, roue Siria, a roas a-nevez Ailam d'ar Siried, hag e kasas kuit ar Iuzevien euz a Ailam : hag an Idumeed a zeuas da Ailam, hag a chomas eno evel ma reont c'hoaz hirio.

7. Hogen Ac'haz a gasas kannaded etrezeg Teglatfalasar, roue an Asiried, evid lavaroud dezañ : Da zervijer ha da vab on ; pign ha tenn ahanon euz a zaouarn roue Siria, hag euz a zaouarn roue Izrael, pere a zo savet o-daou em eneb.

8. Ha p'en-doe dastumet an arhant hag an aour a hellas da gavoud e ti an Aotrou, hag e teñzoriou ar roue, o hasas da rei da roue an Asiried.

9. Roue an Asiried a aotreas dezañ e hoant, a bignas da Zamas hag a wastas anezi : dezougen a reas an dud anezi e Siren, hag e lazas Hasin.

10. Neuze Ac'haz a yeas beteg Damas war arbenn da Deglatfalasar, roue an Asiried, ha pa welas an aoter a oa e Damas, ar roue Ac'haz a gasas da Urias, ar beleg, ar skwer anezi, gand an heveledigez euz he oll labour¹⁰³.

11. Hag Urias ar beleg a zavas eun aoter ; hag eñ he greas en oll hervez m'en-doa e hourhemennet ar roue Ac'haz euz a Zamas, ken na zistroje ahano¹⁰⁴.

12. Ha pa oe distroet ar roue euz a Zamas, e welas an aoter, hag eh enoras anezi ; hag eñ a bignas hag a lazas viktimou, hag a ginnigas e zakrifis e-unan.

13. Hag eñ a reas e vraoued kinnigou, hag a skuillas gwad an ostivou a beoh en-doa kinniget war an aoter.

14. Hogen an aoter arem a oa dirag an Aotrou, he zenna a reas euz a-greiz an templ, hag euz a leh an aoter, hag euz a leh templ an Aotrou, hag e lakaas anezi e-keñver an aoter war-zu an hanternoz.

15. Hag ar roue Ac'haz a hourhemennas da Urias ar beleg, o lavaroud : War an aoter veur e kinnigi ar sakrifis-losk euz ar mintin, hag ar sakrifis euz ar pardaez, ha sakrifis-losk ar roue, hag e zakrifis e-unan, ha sakrifis-losk oll bobl ar vro, hag o zakrifisou o-unan, hag o braoued kinnigou ; hag e skuilli warnezi oll wad ar sakrifisou, hag oll wad ar viktimou : hogen an aoter arem a vezo aozet hervez ma plijo ganen.

16. Urias ar beleg a reas eta kement en-doa gourhemennet dezañ ar roue Ac'haz.

17. Hogen ar roue Ac'haz a dennas ar soliou kizellet, hag ar reol a oa warnezo ; tenna a reas ivez ar mor diwar an ejenned arem war bere e oa douget, hag e lakaas anezañ war leur an templ a oa goloet a vein.

18. Tenna a reas ivez golo ar sabbat, en-doa savet en templ, hag e-leh antre ar roue a-ziavêz, e reas unan e diabarz templ an Aotrou, en abeg da roue an Asiried.

19. Oberiou all Ac'haz, ha kement a reas, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Juda ?

20. Hag Ac'haz a gouskas gand e dadou, hag e oe beziet ganto e kêr David ; hag Ezech'hias, e vab, a renas en e leh.

¹⁰³ he oll labour : penaoz e oa greet an aoter.

¹⁰⁴ ken na zistroje ahano : ken na vefe deuet en-dro Ac'haz euz Damas.

XVII. Pennad.

Salmanasar a gemer Samari, hag a zegas an dud anezi en Asiria.

1. En daouzegved bloaz euz a Ac'haz, roue Juda, Osee, mab Ela, a renas e Samari war Izrael e-pad nao bloaz.
2. Ober a reas an droug dirag an Aotrou ; nann koulskoude evel ar roueed euz a Izrael a oa bet en e raog.
3. Salmanasar, roue an Asiried, a zavas en e eneb, hag Osee a zeuas da blega dezañ ha da baea gwiriou dezañ.
4. Hogen roue an Asiried o veza anavezet penaoz Osee o klask an tu da zispaha, en-doa kaset kannaded etrezeg Sua, roue an Ejipt, evid na baeje mui da roue an Asiried ar gwiriou e oa boazet da baea beb bloaz, a stourmas outañ, hag o veza e drehet, e kasas anezañ er vah.
5. Ha Salmanasar a reas argadennoù dre an oll vro ; hag o pigna beteg Samari, e hronnas anezi e-pad tri bloaz.
6. En naved bloaz euz a Osee, Salmanasar a gemeras Samari, hag a zegasas an Izraelited e bro an Asiried ; hag eñ o lakaas da chom e Hala, hag e Habor, kêriou d'ar Medied, war harz ar Gozan.
7. Rag c'hoarvezoud a reas penaoz bugale Izrael a behas a-eneb an Aotrou o Doue, pehini en-doa o zennet euz a vro an Ejipt, euz a zaouarn Faraon, roue an Ejipt ; ha ma azeuljont doueed a-ziavêz.
8. Hag i a gerzas hervez kiz ar broadou en-doa dismantret an Aotrou dirag bugale Izrael, hag hervez kiz roueed Izrael, o-doa greet en heveleb doare.
9. Ha bugale Izrael o-doa pehet e-keñver an Aotrou, o Doue, gand oberiou direiz : hag i o-doa savet evito lehiou uhel en o oll gêriou, adaleg tour ar gwardou beteg ar gêr greñv.
10. Ober a rejont ivez evid o skeudennou, ha koadou-sakr war an oll grehiou uhel, ha war oll goadou delienneg :
11. Hag i a zeve ezañs war an aoteriou diouz boaz ar broadou en-doa an Aotrou dismantret dirazo : hag i a reas gwall draou hag a heskinas an Aotrou.
12. Hag i a gehelas louzdoniou¹⁰⁵, petra bennag m'en-doa an Aotrou divennet an traou-ze.
13. An Aotrou en-doa testeniet en Izrael hag e Juda, dre heriou e oll brofeded hag ar welerien, o lavaroud : Distroit euz ho kwall heñchou, ha mirit va helennou, ha va lidou hervez an oll lezennou em-eus gourhemennet d'ho tadou ; hag evel ma em-eus o haset deoh dre henou ar brofeded, va zervijerien.
14. Ar re-mañ ne zelaoujont ket ; hogen kaledi a rejont o fennou evel pennou o zadou, pere ne fellas ket dezo senti ouz an Aotrou, o Doue.
15. Hag i a zistaolas e lezennou, hag ar gevredigez en-doa greet gand o zadou, hag an testeniou en-doa roet dezo : hag i a heulias an traou gwan, ha ne rejont nemed traou gwan : mond a rejont war-lerh ar broadou a oa war o zro, petra bennag m'en-doa an Aotrou kelennet outo na rajent evelto.
16. Hag i a zilezas oll gelennoù an Aotrou, o Doue, hag a reas evito daou leue teuz ha koajou-sakr ; hag eh azeuljont oll arme an neñv¹⁰⁶ ; hag e servijjont Baal.
17. Hag i a ouestlas o mibien hag o merhed dre an tan, hag en em rojont d'an

¹⁰⁵ louzdoniou : idolou.

¹⁰⁶ eh azeuljont oll arme an neñv : ?

diouganerez ha d'an aroueziou ; hag e rejont an droug dirag an Aotrou, evid e heskina.

18. Hag an Aotrou a zavas kalz a zroug ennañ a-eneb Izrael, hag a dennas anezo¹⁰⁷ euz a zirazañ ; ha ne chomas nemed breuriez Juda hepken.

19. Ha Juda e-unan ne viras ket gourhemennou an Aotrou e Zoue ; hogen kerzoud a reas en direizon¹⁰⁸ en-doa heuliet Izrael.

20. Hag an Aotrou a zistaolas oll ouenn Izrael, hag a hlaharas anezo, hag a lakaas anezo etre daouarn o gwaskerien, ken n'o distaolas euz a-zirazañ.

21. Hag an amzer e pehini en em rannas Izrael euz a di David, hag e lakejont Jeroboam, mab Nabat, da roue dezo : rag Jeroboam a rannas Izrael diouz an Aotrou, hag o lakaas da ober eur pehed braz.

22. Ha bugale Izrael a gerzas en oll behejou en-doa greet Jeroboam ; ha n'en em dennjont ket diouto,

23. Ken na zistaolas an Aotrou Izrael euz a-zirazañ, er hiz m'en-doa e lavaret dre henou an oll brofeded, e zervijerien : hag Izrael a oe kaset e bro an Asiried, evel ma eo beteg henn.

24. Hogen roue an Asiried a zegasas tud euz a Vabilon, hag euz a Guta, hag euz a Avash, hag euz a Emat, hag euz a Sefarvaim ; hag eñ o lakaas e kêriou Samari e-leh bugale Izrael. Ar re-mañ a oe perhenn da Zamari, hag a chomas en he hêriou.

25. Ha pa zeujont da chom eno, ne zoujont ket an Aotrou ; hag an Aotrou a gasas en o eneb leoned, pere a laze anezo.

26. Danevellet e oe kement-se da roue an Asiried, o lavaroud : An dud eh-eus degaset hag eh-eus lakaet da chom e kêriou Samari, ne anavezont ket lezennou Doue ar vro, hag an Doue-ze en-deus kaset en o eneb leoned pere a laz anezo, o veza ne anavezont ket kehelidigez Doue ar vro.

27. Neuze roue an Asiried a hourhemennas, o lavaroud : Kasit di unan euz ar veleien hoh-eus degaset ahano e sklaverez ; eet, ha chomet ganto, ha desket dezo lezennou Doue ar vro.

28. Unan eta euz ar veleien a oa bet degaset e sklaverez euz a Zamari, a yeas hag a chomas e Samari, hag a zeskas dezo penaoz e tleent kehela an Aotrou.

29. Hogen peb broad a reas pep hini he Doue dezi heh-unan, hag i o lakaas e templou al lehiou uhel o-doa savet ar Samaried, peb broad er gêr e pehini e choment.

30. Ha tud Babilon a reas Soc'hotbenot o Doue, ha tud Kuta a reas Nergel, ha tud Emat a reas Asima.

31. An Heveed a reas Nebahaz ha Tartak. Hogen ar re a oa euz a Zefarvaim a zeve o bugale en tan, en enor da Adramelec'h ha da Anamelec'h, doueed Sefarvaim :

32. Ha koulskoude eh azeulent an Aotrou. Hogen kemeroud a rejont beleien e-touez ar re zisterra evid o lehiou uhel, hag e lakejont anezo en templou ar re vrudeta

33. Ha petra bennag ma azeulent an Aotrou, e servijent ivez o doueed hervez ar boaz euz ar broadou euz a-greiz pere e oant bet dezouget da Zamari.

34. Bete-vremañ eh heuliont c'hoaz o boaz koz ; ne zoujont ket an Aotrou, ha ne viront ket e lidou, nag e varnedigezou, nag e lezenn, nag ar gourhemenn en-deus greet da vugale Jakob, en-deus lesanvet Izrael.

¹⁰⁷ anezo : tud Izrael.

¹⁰⁸ direizon : traou direiz.

35. Hag an Aotrou en-doa greet kevredigez ganto, hag en-doa gourhemennet dezo, o lavaroud : Na zoujit ket doueed a-ziavêz ha na azeulit ket anezo, ha na zervijit ket anezo, ha na rit ket a zakrifis dezo :

36. Hogen an Aotrou, ho Toue, pehini en-deus ho tennet euz a vro an Ejipt gand eun nerz vraz, ha gand eur vreh astennet, doujit eñ ; hag azeulit eñ, ha grit sakrifisou dezañ.

37. Mirit ivez e lidou, hag e varnedigezou, hag e lezennou, hag ar gourhemennou en-deus skrivet deoh, ha grit kement-se bepred ; ha na zoujit doueed a-ziavêz.

38. Na ankounac'hait ket ar gevredigez en-deus greet ganeoh ; ha na gehelit ket doueed a-ziavêz.

39. Hogen doujit an Aotrou, ho Toue ; hag eñ a denno ahanoh euz a zaouarn hoh oll enebourien.

40. Hogen ar re-mañ ne zelaoujont ket, hag eh heulljont bepred o boaziou koz.

41. Evel-se ar broadou-ze a zouje an Aotrou, hag en heveleb amzer e servijent o idolou : hag o mibien hag o nized a reas evel o zadou, hag e reont c'hoaz bremañ.

XVIII. Pennad.

Sennacherib, roue an Asiried, a zeu da vrezekellaad a-eneb bro Juda.

1. En trede bloaz euz a Osee, mab Ela, roue Izrael, e renas Ezech'ias, mab Ac'haz, roue Juda.

2. Pemp bloaz warn-ugent en-doa pa zeuas da reni : ha nao bloaz warn-ugent e renas e Jeruzalem. E vamm a oa anvet Abi, hag a oa merh da Zac'harias.

3. Ober a reas ar pezh a oa mad dirag an Aotrou, hervez kement en-doa greet David, e dad.

4. Eñ a freuzas al lehiou uhel, hag a dorras ar skeudennou, hag a ziskaras ar hoajou-sakr, hag a vrevas an naer arem en-doa greet Moizez ; rag bugale Izrael o-doa devet ezañs dezañ beteg neuze ; hag eñ a halvas anezañ Noliestan.

5. Lakaad a reas e fiziañs en Aotrou, Doue Izrael : rag se ne oe hini heñvel outañ e-touez roueed Juda e-houde, ha ne oe hini zoken en e raog.

6. Hag eñ en em stagas ouz an Aotrou ha n'en em dennas ket euz e heñchou ; ha miroud a reas ar gourhemennou en-doa roet an Aotrou da Voizez.

7. Rag se an Aotrou a oa gantañ, ha kement a ree a oa greet gand furnez. Enebi a reas ivez ouz roue an Asiried, ha ne chomas ket dindan e halloud.

8. Trehi a reas ar Filistined beteg Gaza hag o oll harzou, adaleg touriou ar gwardou beteg ar hêriou-kreñv.

9. Er pevare bloaz euz ar roue Ezech'ias, pehini a oa ar seizved bloaz euz a Osee, mab Ela, roue Izrael, Salmanasar, roue an Asiried, a bignas da Zamari hag a stourmas outi,

10. Hag he hemeras. Rag goude tri bloaz, er c'hwehved bloaz euz a Ezech'ias, da lavaroud eo en naved bloaz euz a Osee, roue Izrael, e oe kemeret Samari.

11. Ha roue an Asiried a zegasas Izrael en Asiria, hag e lakaas anezo e Hala hag e Habor, kêriou d'ar Medied war harz ster Gozan :

12. O veza n'o-doa ket selaouet mouez an Aotrou, o Doue, hogen ma o-doa torret e gevredigez ; o veza ma o-doa na selaouet na greet ar pezh en-doa

gourhemennet dezo Moizez, servijer an Aotrou,

13. Er pevarzegved bloaz euz ar roue Ezec'hias, Sennacherib, roue an Asiried, a bignas da oll gêriou-kreñv Juda, hag a gemeras anezo.

14. Neuze Ezec'hias, roue Juda, a gasas kannaded etrezeg roue an Asiried e Lac'his, evid lavaroud : Pehet em-eus, en em denn diouzin ; ha kement a likii warnon a zougin. Roue an Asiried a zavas eta war Ezec'hias, roue Juda, tri-hant talant arhant ha tregont talant aour.

15. Hag Ezec'hias a roas dezañ an oll arhant a oe kavet e ti an Aotrou, hag e teñzoriou ar roue.

16. En amzer-ze Ezec'hias a zistagas stalafiou doriou templ an Aotrou, hag al lavnennou aour en-doa staget outo, hag eñ o roas da roue an Asiried.

17. Hogen roue an Asiried a gasas Tartan, ha Rabsaris, ha Rabsasez, euz a Lec'his da Jeruzalem etrezeg ar roue Ezec'hias, gand eun arme greñv ; hag ar remañ o veza pignet a zeuas da Jeruzalem hag a arzavas e-harz kann al lenn uhella, a zo war hent park-ar-hommer.

18. Hag i a halvas ar roue ; hag Eliasim, mab Helsias, merer an ti, ha Sobna, ar skrivagner, ha Juabe, mab Asaf, an dieller, a zeuas d'o havoud.

19. Ha Rabsasez a lavaras dezo : Livirit da Ezec'hias : evel-henn eta e lavar ar roue braz, roue an Asiried : Petra eo ar fiziañs-se war behini en em harpez ?

20. Marteze eh-eus kemeret an dezo d'en em aoza d'an emgann. E piou e fiziez-te, ma kredez dispaha ouzin ?

21. Ha te a fizio e roue an Ejipt, pehini n'eo nemed eur gorzenn dorret ; mar deu eun den d'en em harpa warnezi, e torro, ez ay an tammou en e zorn, hga e toullo anezañ treuz-didreuz ? Evel-se ema Faraon, roue an Ejipt, e-keñver kement hini a laka e fiziañs ennañ.

22. Ma livirit din : en Aotrou on Doue e lakaom or fiziañs ; ha n'eo ket hennez euz a behini en-deus Ezec'hias diskaret al lehiou uhel hag an aoteriou, hag en-deus gourhemennet da Juda ha da Jeruzalem, o lavaroud : Dirag an aoter-mañ eh azeulot e Jeruzalem ?

23. Bremañ eta kerzit a-eneb va aotrou, roue an Asiried, ha me a roy deoh daou vil marh ; ha gwelit mar gellot kavoud tud da bigna warnezo.

24. Ha penaoz e hellfes-te enebi ouz eur habitan hepken hag a zisterra servijerien va aotrou ? Ha fizioud a rez en Ejipt en abeg d'e girri ha d'e varheien ?

25. Hag a-eneb youl an Aotrou on-me pignet el leh-mañ, evid e gas da get ? An Aotrou en-deus lavaret din : pign d'ar vro-ze ; ha kas hi da get.

26. Hogen Eliasim, mab Helsias, ha Sobna, ha Joabe, a lavaras da Rabsasez : Da bedi a reom ma komzi ouzom-ni, da zervijerien, e yez ar Siried, rag ni a oar ar yez-se ; ha na gomz ket ouzom-ni e yez ar Iuzevien dirag ar bobl a zelaou war ar vur.

27. Ha Rabsasez a lavaras dezo : Hag etrezeg da aotrou, hag etrezeg ennout eo en-deus va haset va aotrou, evid lavaroud kement-mañ : ha n'eo ket kentoh etrezeg an dud-se pere a zo war ar vur, a zebro o haoh hag a evo o zroaz ganeoh ?

28. Rabsasez eta a zavas, hag a grias gand eur vouez kreñv e yez ar Iuzevien, o lavaroud : Selaouit geriou ar roue braz, roue an Asiried.

29. Evel-henn e lavar ar roue : Na douellet ket Ezec'hias ahanout, rag ne hello ket ho tenna euz va dorn.

30. Ha n'ho lakaet ket da fizioud en Aotrou, o lavaroud : An Aotrou a ziboanio ahanom, hag ar gêr-mañ ne vezo ket lakaet etre daouarn roue an Asiried.

31. Na zelaouit ket Ezec'hias, rag evel-henn e lavar roue an Asiried : Grit

ganen ar pezh a zo talvouduz deoh, ha deuit d'am havoud : ha pep hini ahanoh a zebro euz e winienn hag euz e fiezenn, hag a evo dour euz e buñsou,

32. Ken na zeuin ha na zegasin ahanoh en eun douar a zo heñvel ouz ho touar, douar frouezuz, ha fonnuz e gwin, douar bara ha gwiniennou, douar olived, douar eoul ha mel ; hag e vevot, ha ne varvot ket. Na zelaouit ket Ezech'ias, pehini a doulle ahanoh, o lavaroud : An Aotrou a zizoanio ahanom.

33. Doueed ar broadou, hag i o-deus tennet o douar euz a zaouarn roue an Asiried ?

34. Peleh ema doue Emat, ha doue Arfad ? Peleh ema doue Sefarvaim, doue Ana, ha doue Ava ? Ha tennet o-deus-i Samari euz va dorn ?

35. Ha bez' ez eus unan e-touez oll zoueed ar broadou, a gement en-defe tennet e vro euz va daouarn, evid ma hellfe an Aotrou tenna Jeruzalem euz va daouarn ?

36. Koulskoude ar bobl a davas, ha ne respontas netra dezañ ; rag ar roue en-doa gourhemennet dezo na respontjent ket dezañ.

37. Neuze Eliasim, mab Helsias, merer an ti, ha Sobna ar skrivagner, ha Joshe, mab Asaf, an dieller, a zeuas da gavoud Ezech'ias, goude beza roget o dillad ; hag i a roas da anaoud dezañ geriou Rabsasez.

XIX. Pennad.

Trehet eo arme Sennacherib gand el an Aotrou.

1. Pa glevas ar roue Ezech'ias kement-se, e rogas e zillad, e lakaas eur sah war e benn, hag ez eas e-barz ti an Aotrou.

2. Hag eñ a gasas Eliasim, merer an ti, ha Sobna ar skrivagner, hag henaoued ar veleien, goloet gand seier, etrezeg Izaias, ar profed, mab Amos.

3. Hag ar re-mañ a lavaras dezañ : Evel-henn e lavar Ezech'ias : Eun deiz a hlaha hag a damall hag a zroug-pedenn eo an deiz-mañ ; deuet eo ar vugale beteg war-nes genel, hag ar wreg e gwilioud n'he-deus ket a nerz.

4. Marteze en-devezo klevet an Aotrou, da Zoue, oll heriou Rabsasez a zo bet degaset gand roue an Asiried, e vestr, evid droug-pedi gand an Doue beo, hag evid e heskina gand geriou en-deus klevet an Aotrou da Zoue ; gra eta da bedenn evel ar re n'eus chomet ken nemeto.

5. Servijerien ar roue Ezech'ias a yeas eta etrezeg Izaias.

6. Hag Izaias a lavaras dezo : An dra-mañ a leverot d'ho mestr : Evel-henn e lavar an Aotrou : N'ho-pezet ket a aon rag ar geriou hoh-eus klevet, gand pere servijerien roue an Asiried o-deus droug-pedet ganen.

7. Setu e kasin dezañ eun avel, hag eñ a glevo eur helou, hag e tistroy d'e vro : ha me hel lakay da goueza dindan ar hleze en e vro e-unan.

8. Rabsasez eta a zistroas hag a gavas roue an Asiried pehini a stourme ouz Sobna ; rag klevet en-doa penaoz e oa en em dennet euz a-zirag Lac'his.

9. Ha pa glevas ano euz a Daraka, roue Etiopia, o lavaroud : Eet eo er-mêz evid stourmi ouzit ; a-barz ma'z eas en e eneb, e kasas kannaded etrezeg Ezech'ias, o lavaroud :

10. Livirit an dra-mañ da Ezech'ias, roue Juda : Na vez ket touellet gand da Zoue e pehini ema da fiziañs, ha na lavar ket : Ne vezo ket lakaet Jeruzalem etre daouarn roue an Asiried.

11. Rag te eh-eus klevet da-unan petra o-deus greet roueed an Asiried d'an oll vroiou, ha penaoz o-deus o gwastet ; ha ne vezo nemedout bremañ a hello beza dieubet ?

12. Doueed ar broadou, hag i o-deus dizoaniet ar re o-deus gwastet va zadou, da lavaroud eo Gozan, hag Haran, ha Resef, ha mibien Eden, pere a oa e Telasar ?

13. Peleh ema roue Emat, ha roue Arfad, ha roue kêr Sefarvaim, hag Ana, hag Ava ?

14. Ezec'hias o veza kemeret al lizer euz a zorn ar gannaded, e lennas, a bignas da di an Aotrou, hag e zisplegas dirag an Aotrou.

15. Hag Ezec'hias a bedas dirazañ, o lavaroud : Aotrou, Doue Izrael, pehini a zo azezet war ar jerubined, te hepken eo Doue oll roueed an douar ; te eo eh-eus greet an neñv hag an douar.

16. Ro skouarn ha selaou ; digor da zaoulagad, Aotrou, ha gwel ; selaou oll heriou Sennacherib, pehini en-deus kaset evid droug-pedi gand an Doue beo dirazom.

17. Gwir eo, Aotrou, penaoz roueed an Asiried o-deus gwastet an oll vroadou hag o douarou,

18. Ha ma o-deus taolet o doueed en tan ; rag ne oant ket doueed, hogen labour daouarn an dud, greet gand koad ha gand mein ; hag i o-deus torret anezo.

19. Bremañ eta, Aotrou, on Doue, tenn ahanom euz e zorn, evid ma ouezo oll rouanteleziou an douar penaoz te hepken eo an Aotrou Doue.

20. Neuze Izaias, mab Amos, a gasas da gavoud Ezec'hias, evid lavaroud dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou, Doue Izrael : Ar bedenn eh-eus greet din diwar-benn Sennacherib, roue an Asiried, em-eus klevet.

21. Setu petra en-deus lavaret an Aotrou anezañ : Ar werhez, merh Sion, he-deus e zisprizet ha greet goap ahanout : merh Jeruzalem he-deus hejet he fenn a-dreñv da gein.

22. Piou eh-eus-te heskinet, ha diwar-benn piou eh-eus-te droug-komzet ? A-eneb piou eh-eus-te savet da vouez ha da zaoulagad ? A-eneb Sant Izrael.

23. Dre henou da zervijerien eh-eus heskinet an Aotrou, hag eh-eus lavaret : Gand al lod braz euz va hirri on bet pignet war lein menezioù al Liban, hag em-eus diskaret e wez sedr ar re uhella, hag ar re gaerra euz e wez sapr, hag eet on beteg e harzou, hag em-eus diskaret koad ar Harmel.

24. An doureier a-ziavêz em-eus evet, hag em-eus dizehet gand roudou va zreid an oll zoureier kloz.

25. Ha n'eh-eus ket klevet petra em-eus greet adaleg ar penn kenta ? Abaoe an deizioù koz em-eus e aozet, ha bremañ em-eus e gaset da benn ; hag ar hêriou-kreñv o veza stourmet a zo bet gwastet evel krehiou dihentet.

26. Hag ar re a chome enno, o veza ma oa dinerz o daouarn, o-deus krenet, hag a zo bet karget a vez ; deuet int da veza evel foenn ar parkeier, hag evel geot glaz an toennou, pehini a zizeh a-barz ma teu da veza eog.

27. Rag pell amzer 'zo am-eus anavezet peleh edos o chom, pevare e teujes hag ez ajes kuit, hag an hent eh-eus kerzet drezañ, ha da ziboell em eneb.

28. Rog out bet em heñver, ha da rogoni a zo bet pignet beteg va diskouarn. Lakaad a rin eta eur minouer ouz da fri, hag eur weskenñ ouz da henou, hag e likiin ahanout da zistrei dre an hent dre behini out deuet.

29. Hogen evidout, Ezec'hias, hemañ a vezo an arouez : Debr hevlene ar pez a helli da gavoud ; en eil bloaz, ar pez a zavo anezañ e-unan ; hogen an trede bloaz, hadit ha kutuillit ; plantit gwiniennou, ha debrit ar frouez anezo.

30. Ha kement a chomo euz a di Juda, a daolo e wrizioù d'an traoñ, hag a zougo e frouez war-laez.

31. Rag ar re a chom nebeud anezo a zeuy er-mêz euz a Jeruzalem, ha kement a vezo saveteet euz a venez Sion ; karantez Aotrou an armeou a ray kement-se.

32. Rag se setu petra a lavar an Aotrou diwar-benn roue an Asiried : Ne day ket er gêr-ze, ha ne gavo ket a zaez enni, hag an direnn ne chomo ket enni, hag ar hreñvou ne raint ket an dro anezi.

33. Dre an hent dre behini eo deuet, e tistroio, ha ne day ket er gêr-ze, eme an Aotrou.

34. Ha me a ziwallo ar gêr-ze, hag a ziboanio anezi en abeg din, hag en abeg da Zavid va zervijer.

35. C'hoarvezoud a reas eta en nozvez-se, penaoz e teuas êl an Aotrou, hag e lazas e kamp an Asiried pemp mil ha nao-ugent mil den. Ha pa zavas Sennacherib diouz ar mintin, e welas an oll gorfou maro ; hag ez eas kuit.

36. Ha Sennacherib, roue an Asiried, a zistroas hag a chomas e Niniv.

37. Ha pa azeule Nesroc'h, e zoue, en e dempl, Adramelec'h ha Sarasar, e vibien, a lazas anezañ gand ar hleze, hag a dehas e bro an Armenied : hag Asarbaddon a renas en e leh.

XX.Pennad.

Tamallet eo Ezeq'hias en abeg m'en-doa diskouezet e deñzoriou.

1. En deizioù-ze e klañvaas Ezeq'hias beteg ar maro ; hag Izaias, ar profed, mab Amos, a zeuas d'e gavoud, hag a lavaras dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou Doue : Laka reiz en da di ; rag mervel a ri, ha ne vezi mui.

2. Neuze hemañ a droas e zaoulagad ouz ar voger, hag a bedas an Aotrou, o lavaroud :

3. Az-pezh koun, Aotrou, me az ped, penaoz em-eus baleet dirazout er wirionez ha gand eur galon hweg, ha penaoz em-eus greet ar pezh a oa mad dirazout. Hag Ezeq'hias a ouelas doureg.

4. Ha pa oe tremenet gand Izaias an hanter euz an nor-dal, ger an Aotrou a gomzas outañ, o lavaroud :

5. Distro, ha lavar da Ezeq'hias, blenier va fobl : Evel-henn e lavar an Aotrou, Doue David da dad : Klevet em-eus da bedenn, ha gwelet em-eus da zaerou ; ha setu em-eus da bareet ; a-benn tri deiz e pigni da dempl an Aotrou.

6. Ha me a lakay c'hoaz pemzeg vloaz oupsenn war da zeizioù ; hag e tennin ahanout hag ar gêr-mañ euz a zaouarn an Asiried ; hag e tiwallin ar gêr-mañ en abeg din, hag en abeg da Zavid va zervijer.

7. Hag Izaias a lavaras : Degasit eur maread figez. Hga i o degasas, a lakaas anezo war e houli, hag eñ a oe pareet.

8. Hogen Ezeq'hias en-doa lavaret da Izaias : Petra e vezo an arouez penaoz e yac'hay an Aotrou ahanon, ha penaoz a-benn tri deiz e pignin da dempl an Aotrou ?

9. Hag Izaias a lavaras dezañ : Houmañ eo an arouez a roy dit an Aotrou, penaoz e seveno-eñ ar ger en-deus lavaret. Ha te a fell dit ez aje skeud an heol a-

raog a-hed deg roudenn¹⁰⁹, pe e tistroje war e hiz a-hed kemend-all a zeiziu ?

10. Hga Ezeç'hias a lavaras : Êz eo d'ar skeud mond a-raog a-hed deg roudenn ; n'eo ket an dra-ze a fell din a hoarvezje ; hogen ma tistroje war e hiz a-hed deg daez¹¹⁰.

11. Izaias ar profed a bedas eta an Aotrou ; hag eñ a lakaas ar skeud da zistrei war e hiz war gadran Ac'haz, hed an deg daez dre bere e oa bet diskennet.

12. En amzer-ze Berodac'h-Baladan, mab Baladan, roue ar Vabilonied, a gasas liziri ha traou kaer da Ezeç'hias ; rag klevet en-doa penaoz e oa bet klañv Ezeç'hias.

13. Laouen-braz e oe Ezeç'hias euz o¹¹¹ donedigez, hag e tiskouezas dezo ti e louzou c'hwez-vad, hag e aour, hag e arhant, hag e ginklerezou, hag e dretou, ha ti e armou, ha kement en-doa en e deñzoriou. Ne oe netra en e di hag en e gerz, na ziskouezas dezo Ezeç'hias.

14. Hogen Izaias, ar profed, a zeuas da gavoud ar roue Ezeç'hias, hag a lavaras dezañ : Petra o-deus lavaret an dud-se ? Hag a beleh int-i deuet d'az kavoud ? Hag Ezeç'hias a lavaras dezañ : Euz a eur vro bell int deuet d'am havoud, euz a Vabilon.

15. Hag eñ a lavaras : Petra o-deus-i gwelet en da di ? Hag Ezeç'hias a lavaras : Kement a zo em zi o-deus gwelet ; n'eus netra en teñzoriou ha n'em-eus ket diskouezet dezo.

16. Neuze Izaias a lavaras da Ezeç'hias : Selaou ger an Aotrou.

17. Setu e teuy an deiziu e pere e vezo kaset da Vabilon kement a zo en da di, ha kement o-deus dastumet ennañ da dadou beteg-henn ; ne chomo netra, eme an Aotrou.

18. Kemeret e vezo ivez euz da vibien, euz ar re a vezo deuet ahanout, euz ar re az-pezo ganet ; hag i a vezo spazeien, e lez roue Babilon.

19. Neuze Ezeç'hias a lavaras da Izaias : Mad eo ger an Aotrou eh-eus lavaret ; ra vezo ar peoh hag ar wirionez em deiziu.

20. Oberiu all Ezeç'hias, hag e oll nerz, ha penaoz e reas eul lenn, hag eur san-dour, hag e tegasas an dour e kêr, ha n'eo ket skrivet kement-se e levr oberiu roueed Juda ?

21. Hag Ezeç'hias a gouskas gand e dadou, ha Manasez, e vab, a renas en e leh.

XXI. Pennad.

Fallagriez Manasez ; e varo. Amon, e vab a ren en e leh.

1. Daouzeg vloaz en-doa Manasez pa zeuas da reni ; hag eñ a renas pemp bloaz hag hanter-kant e Jeruzalem ; e vamm a oa anvet Hafsiba.

2. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, oh heulia idolou ar broadou, en-doa dismantret an Aotrou euz a-zirag bugale Izrael.

3. Sevel a reas adarre al lehiou uhel en-doa diskaret Ezeç'hias e dad. Sevel a reas ivez aoteriu da Vaal, hag e reas koajou-sakr evel evel m'en-doa greet

¹⁰⁹ roudenn : derez.

¹¹⁰ daez : ? "derez" evel "roudenn".

¹¹¹ o : ar gannaded.

Ac'hab, roue Izrael, hag eh azeulas oll arme an neñv, hag e kehelas anezo.

4. Sevel a reas ivez aoteriou e ti an Aotrou, euz a behini en-doa lavaret an Aotrou : E Jeruzalem e likiin va ano.

5. Hag eñ a zavas aoteriou da oll arme an neñv e diou leur ti an Aotrou.

6. Lakaad a reas e vab da dreuzi an tan ; en em rei a reas d'an diouganerez, arvesti a reas an aroueziou ; diwalloud a reas ar gelherien, hag e kreskas niver ar strobinnerien, evid ober an droug dirag an Aotrou, hag evid e heskina.

7. Lakaad a reas ivez idol ar hoad en-doa greet, e templ an Aotrou, diwar-benn pehini en-doa lavaret an Aotrou da Zavid ha da Zalomon e vab : en templ-mañ hag e Jeruzalem, em-eus dilennet euz a oll vreureziou Izrael, e likiin va nao da viken.

8. Ha ne fell ket din ez afe Izrael kuit birviken euz an douar em-eus roet d'o zadou : gand ma virint an oll hourhemennou em-eus roet dezo, hag an oll lezenn en-deus kemennet dezo Moizez, va zervijer.

9. Hogen ne zelaoujont ket ; hag i a oe touellet gand Manasez, evid ober gwasoh droug eged n'o-doa greet ar broadou en-doa dismantret an Aotrou a-zirag bugale Izrael.

10. Hag an Aotrou en-deus komzet dre henou ar brofeded e zervijerien, o lavaroud :

11. O veza ma en-deus Manasez, roue Juda, greet ar gwall fallagriezou-ze gwasoh eged ar re oll o-doa greet an Amorreed en e raog, ha ma en-deus ivez lakaet Juda da behi gand hudurezou :

12. Rag se setu petra a lavar an Aotrou, Doue Izrael : Setu e kasin droug war Jeruzalem ha Juda ha neb her hlevo, e voudo e ziskouarn.

13. Ha me a astenno war Jeruzalem kordenn Samari, ha pouez ti Ac'hab ; ha me a ziverko Jeruzalem evel ma tiverker taolennou, hag oh he diverka, e troin hag e tistroin aliez ar broud war he gorre.

14. Dilezel a rin ar re all euz va degouez, hag e likiin anezo etre daouarn o enebourien ; hag i a vezo gwastet ha preizet gand o oll enebourien ;

15. O veza ma o-deus greet an droug dirazon, ha ma o-deus kendalhet d'am heskina, adaleg an deiz e pehini eo deuet o zadou er-mêz euz an Ejipt, beteg an deiz-mañ.

16. Manasez ouspenn en-deus skuillet kalz a wad dinamm, ken n'en-deus leuniet gantañ Jeruzalem penn-dre-benn ; heb niveri e behejou e-unan, gand pere en-deus lakaet Juda da behi, evid ober an droug dirag an Aotrou.

17. Oberiou all Manasez, ha kement en-deus greet, hag ar pehed en-deus greet, ha n'int ket bet skrivet e levr oberiou roueed Juda ?

18. Ha Manasez a gouskas gand e dadou, ha beziet e oe e liorz e di, e liorz Oza ; hag Amon, e vab, a renas en e leh.

19. Daou vloaz warn-ugent en-doa Amon pa zeuas da reni, ha daou vloaz e renas e Jeruzalem ; e vamm a oa anvet Mesalemet, merh Harus euz a Jeteba.

20. Ober a reas an droug dirag an Aotrou, evel m'en-doa greet Manasez e dad.

21. Hah eñ a valeas en oll heñchou e pere en-doa baleet e dad ; kehela a reas an hudurnezou en-doa kehelet e dad, hag eh azeulas anezo.

22. Dilezel a reas an Aotrou, Doue e dadou, ha ne valeas ket e hent an Aotrou.

23. E zervijerien a aozas spiou dezañ, hag e lazjont ar roue en e di e-unan.

24. Hogen pobl ar vro a skoas gand ar re oll a oa en em zavet a-eneb ar roue Amon ; hag i a lakaas Josias, e vab, da reni en e leh.

25. Oberiou all Amon ha n'int ket skrivet e levr oberiou roueed Juda ?

26. Beziet e oe en e vez e-unan, e liorz Oza ; ha Josias, e vab, a renas en e leh.

XXII. Pennad.

Spontet eo Josias en eur lenn levr al lezenn.

1. Eiz vloaz en-doa Josias pa zeuas da reni, hag eur bloaz ha tregont e renas e Jeruzalem ; e vamm a oa anvet Idida, merh Hadaia, euz a Vesekat.

2. Ober a reas ar pezh a oa mad dirag an Aotrou, hag e valeas dre an oll heñchou euz a Zavid, e dad ; ha ne droas nag a-zehou nag a-gleiz.

3. En triwehved bloaz euz a ren Josias, ar roue a gasas Safan, mab Asia, mab Mesulam, skrivagner templ an Aotrou, o lavaroud dezañ :

4. Kee da gavoud Helsias ar beleg-braz, ma vezo dastumet an arhant a zo bet kaset da dempl an Aotrou, a zo bet dastumet digand ar bobl gand porzerien an templ.

5. Ha bezet roet gand mererien ti an Aotrou d'an embregerien, pere e ranno etre ar re a labouro evid aoza an templ.

6. Da lavaroud eo, d'ar gilvizien, d'ar vañsonerien, ha d'ar re a zres an toullou-freuz ; hag evid prena koad ha mein-mengleuz, evid aoza templ an Aotrou.

7. Koulskoude na vezet ket goulennet kont diganto euz an arhant a vezo roet dezo ; hogen bezet en o herz, hag e pep fiziañs.

8. Neuze Helsias, ar beleg-braz, a lavaras da Zafan ar skrivagner : Eul levr euz al lezenn em-eus kavet e ti an Aotrou ; hag Helsias a roas al levr da Zafan, pehini a lennas anezañ.

9. Ha Safan, ar skrivagner, a zeuas da gavoud ar roue, hag a reas e zanevell war ar pezh a oa bet gourhemennet dezañ, hag a lavaras : Da zervijerien o-deus dastumet an arhant bet kavet e ti an Aotrou, hag o-deus e roet d'ar vererien evid e ranna etre ar re a labouro evid aoza templ an Aotrou.

10. Safan, ar skrivagner, a zanevellas c'hoaz d'ar roue, o lavaroud : Helsias, ar beleg-braz, en-deus roet eul levr din. Ha Safan a lennas anezañ dirag ar roue.

11. Pa glevas ar roue geriou levr al lezenn, e rogas e zillad.

12. Hag eñ a hourhemennas da Helsias, ar beleg-braz, ha da Ahikam, mab Safan, ha da Ac'hobor, mab Mic'ha, ha da Zafan, ar skrivagner, ha da Asaias, servijer ar roue, o lavaroud :

13. It, ha goulennit kuzul an Aotrou warnon, ha war va fobl, ha war Juda oll, diwar-benn geriou al levr-se a zo bet kavet ; rag eun droug braz a zo savet en Aotrou en on eneb, o veza n'o-deus ket selaouet on tadou geriou al levr-se, ha n'o-deus ket greet ar pezh a zo bet skrivet evidom.

14. Helsias, ar beleg-braz, hag Ahikam, hag Ac'hobor, ha Safan, hag Asias a yeas eta da gavoud Holda, ar brofedez, gwreg Sellum, mab Tetuas, mab Araas, mirer ar gwiskamañchou, pehini a chome en eil kloz¹¹² euz a Jeruzalem ; hag ar re-mañ a gomzas outi.

15. Hag hi a lavaras dezo : Evel-henn e lavar an Aotrou, Doue Izrael : Livirit, d'an den en-deus ho kaset etrezeg ennon :

16. Evel-henn e lavar an Aotrou : Setu e tegasin poaniou war al leh-mañ ha war re a chom ennañ, hervez oll lavariou levr al lezenn en-deus lennet roue Juda,

¹¹² kloz : karter.

17. O veza ma o-deus va dilezet, ha ma o-deus kinniget sakrifisou da zoueed a-ziavêz, oh va heskina gand oll oberiou o daouarn ; ha va buanegez en em entano el leh-se ha ne vougo ket.

18. E-keñver roue Juda, pehini en-deus ho kaset evid goulenn kuzul digand an Aotrou, e leverot : Evel-henn e lavar an Aotrou, Doue Izrael : O veza ma eh-eus selaouet geriou al levr-se,

19. Ha ma eo bet spontet da galon, ha ma out en em izellaet dirag an Aotrou, ha pa eh-eus klevet al lavariou a-eneb al leh-mañ hag ar re a chom ennañ, penaoz e kouezint eun deiz a vezo er zaouzan hag er valloz ; ha ma eh-eus roget da zillad, ha eh-eus gouelet dirazon ; me em-eus da zelaouet, eme an Aotrou :

20. Rag se e likiin ahanout gand da dadou, hag e vezi lakaet e peoh en da vez, evid na welo ket da zaoulagad an droug a zegasin war al leh-se.

XXIII. Pennad.

Joac'has, mab Josias, a zo kaset e sklaverez en Ejipt.

1. Hag i a zanevellas adarre d'ar roue ar pezh en-doa lavaret ar brofedez. Hag eñ a gasas, hag a lakaas da zastum war e dro oll henaoured Juda ha Jeruzalem.

2. Hag ar roue a bignas da dempl an Aotrou, ha gantañ oll dud Juda, hag ar re oll a chome e Jeruzalem, hag ar veleien, hag ar brofeded, hag an oll bobl adaleg ar bihanna beteg ar brasa ; hag eñ a lennas dirazo oll heriou levr ar gevredigez a oa bet kavet e ti an Aotrou.

3. Hag ar roue a zavas war eun desez¹¹³, hag a reas kevredigez dirag an Aotrou, evid ma valejent war-lerh an Aotrou, ha ma virjent e hourhemennou hag e desteniezou, hag e lidou, euz o oll galon, hag euz o oll ene, ha ma sevenjent geriou ar gevredigez-se a zo skrivet el levr-se ; hag ar bobl a aotreas ar gevredigez.

4. Hag ar roue a hourhemennas da Helsias, ar beleg-braz, ha d'ar veleien euz an eil reiz, ha d'ar borzerien, teurel er-mêz euz a dempl an Aotrou an oll listri a oa bet greet evid Baal, hag evid ar hoad-skar, hag evid oll arme an neñv ; hag eñ o devas er-mêz euz a Jeruzalem, e traonienn Sedron, hag a zougas al ludu anezo da Vetel.

5. Laza a reas ivez ar veleien a oa bet lakaet gand roueed Juda evid ober sakrifisou war al lehiou uhel, e kêriou Juda, ha war-dro da Jeruzalem ; hag ar re a zeve ezañs da Vaal, ha d'an heol, ha d'al loar, ha d'ar steredennou-red, ha da oll arme an neñv.

6. Lakaad a reas ivez da denna euz a di an Aotrou idol ar hoad-sakr, hag e gas er-mêz euz a Jeruzalem e traonienn Sedron, hag eno e oent devet, lakaet e ludu, ha taolet al ludu war beziou ar bobl.

7. Diskara a reas ivez tiegeziou ar Sodomidi¹¹⁴ a oa e ti an Aotrou, evid pere e ree ar merhed doare goueliou¹¹⁵ evid ar hoad-sakr.

8. Neuze e tastumas an oll veleien euz a gêriou Juda ; hag e saotras al lehiou uhel, e pere e kinnige ar veleien sakrifisou, adaleg Gabaa beteg Bersabe, hag eñ a ziskaras aoteriou ar perzier ouz dor ti Josue, priñs kêr, pehini a oa war an tu kleiz

¹¹³ eun desez : eul leurenn.

¹¹⁴ ar Sodomidi : ar gisti (tud a Zodom).

¹¹⁵ goueliou : teltennou.

euz a borz kêr.

9. A neuze beleien al lehiou uhel ne bignent ket ouz aoter an Aotrou e Jeruzalem ; hogen hepken e tebrent ar bara dihoell e-mesk o breudeur.

10. Saotra a reas ivez Tofet a zo e traonienn mab Ennom, evid na ginnigje den e vab pe e verh da Voloc'h oh o lakad da dreuzi an tan.

11. Tenna a reas ivez ar hezeg o-doa roet roueed Juda d'an heol, hag a oa e-tal dor templ an Aotrou, e-kichenn tiig Natanmelec'h ar spaz, a oa e Farurim ; hag e tevas gand an tan kirri an heol.

12. Ar roue a ziskaras ivez an aoteriou a oa war lein kambr Ac'haz, o-doa greet roueed Juda, hag an aoteriou en-doa greet Manasez, e diou leur templ an Aotrou ; hag e teredas ahano, hag e taolas al ludu anezo e froud Sedron.

13. Ar roue a zaotras ivez al lehiou uhel a oa war harz Jeruzalem en tu dehou euz a venez ar gwall-skwer, en-doa savet Salomon, roue Izrael, da Astarot, idol ar Sidonied, ha da Hamoas, gwall-skwer Moab, ha da Velc'hom, argarzidigez bugale Ammon.

14. Hag eñ a dorras ar skeudennou, hag a ziskaras ar hoajou-sakr ; hag e leunias al lehiou-ze gand eskern tud varo.

15. Hag e-keñver an aoter a oa e Betel, hag al leh uhel en-doa savet Jeroboam, mab Nabat, pehini en-doa lakaet Izrael da behi, e tiskaras hag an aoter hag al leh uhel ; o devi a reas hag o lakaas e ludu, hag e lakaas ivez an tan er hoad-sakr.

16. Ha Josias o veza distroet di, a welas ar beziou a oa war ar menez ; hag e kasas tud da gemeroud an eskern euz ar beziou, hag e tevas anezo war an aoter, hag e saotras anezi hervez ger an Aotrou en-doa lavaret an den Doue pehini en-doa diouganet an traou-ze.

17. Ha neuze e lavaras : Pe vez eo hennez a welan ? Ha tud ar gêr-ze a lavaras dezañ : Bez an den Doue eo, pehini a oa deuet euz a Juda, hag en-doa diouganet ar pezh eh-eus greet war aoter Betel.

18. Ha Josias a lavaras : List-eñ, ha na fiñvet den e eskern. Hag e eskern a chomas difiñv, kerkoulz hag eskern ar profed a oa deuet euz a Zamari.

19. Josias a ziskaras c'hoaz oll demplou al lehiou uhel, e oa e kêriou Samari, o-doa greet roueed Izrael evid heskina an Aotrou ; Hag eñ a reas en o heñver evel m'en-doa greet e-keñver re Vetel.

20. Hag eñ a lazas oll veleien al lehiou uhel, a oa eno, war an aoteriou ; hag e tevas warnezo eskern tud varo ; hag e tistroas da Jeruzalem.

21. Hag eñ a hourhemnennas d'an oll bobl, o lavaroud : Grit ar Pask d'an Aotrou ho Roue, evel ma eo skrivet el levr-se a gevredigez.

22. Ha ne oe ket greet a bask en-doare-ze abaoe deiziou ar varnerien o-doa barnet Izrael, hag e oll zeiziou roueed Izrael ha roueed Juda.

23. Evel ma oe greet ar Pask-se d'an Aotrou e Jeruzalem, en triwehved bloaz euz ar roue Josias.

24. Josias a gasas ivez da get ar strobinnerien, hag an diouganerien, ha skeudennou an idolou, hag an hudurnezou, hag an argarzidegezou a oa bet e bro Juda hag e Jeruzalem, evid seveni geriou al lezenn, pere a oa skrivet el levr en-doa kavet Helsias, ar beleg-braz, e templ an Aotrou.

25. N'eus ket bet en e raog a roue heñvel outañ, a gement a zo bet distroet etrezeg an Aotrou euz e oll galon, hag euz e oll ene, hag euz e oll nerz, hervez oll lezenn Moizez ; ha ne zavas hini e-houde heñvel outañ.

26. Koulskoude an Aotrou ne zistroas ket e vuanegez hag e froudenn vraz diwar Juda, en abeg d'ar fallagriezou gand pere en-doa e heskinet Manasez.

27. An Aotrou eta a lavaras : Disteurel a rin ivez a-zirazon Juda, evel ma emeus distaolet Izrael ; hag e tilezin ar gêr-ze a Jeruzalem pehini em-boa dilennet, hag an ti diwar-benn pehini em-eus lavaret : Va ano a vezo eno.

28. Oberiou all Josias, ha kement en-deus greet, ha n'int ket skrivet e levr oberiou roueed Juda ?

29. En e zeiziu e pignas Faraon Nec'hao, roue an Ejipt, a-eneb roue an Asiried, war-zu ster Eufratez ; hag ar roue Josias a ziarbennas anezañ : ha pa welas anezañ, e oe lazet¹¹⁶ e Mageddo.

30. Hag e zervijerien a zougas anezañ maro euz a Vageddo, hag a zegasas anezañ da Jeruzalem, hag a vezias anezañ en e vez e-unan. Ha pobl ar vro a gemeras Joac'haz, mab Josias, a eoulias anezañ, hag hel lakaas da roue e leh e dad.

31. Tri bloaz-warn-ugent en-doa Joac'haz pa zeuas da reni ; hag eñ a renas tri miz e Jerualem ; e vamm a oa anvet Amital, merh Jeremias, euz a Lobna.

32. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, e kement m'o-doa greet e dadou.

33. Ha Faraon Nec'hao a chadennas anezañ e Rebla, a zo e bro Emat, evid na renje ket e Jeruzalem ; hag eñ a zavas evid gwir war ar vro kant talant arhant hag eun talant aour,

34. Ha Faraon Nec'hao a lakaas Eliasim, mab Josias, da roue e leh Josias e dad : hag eñ a droas e ano e Joakim ; hogen kemeroud a reas Joac'haz, hag e kasas anezañ en Ejipt, e peleh e varvas.

35. Joakim a roas da Faraon an arhant hag an aour, hervez ar gwir en-doa savet war bep hini er vro, evid paea an tell gourhemennet gand Faraon ; hag eñ a dennas an arhant hag an aour digand pobl ar vro, da bep hini diouz e halloud, evid o rei da Faraon Nec'hao.

36. Joakim en-doa pemp bloaz warn-ugent pa zeuas da reni ; hag eñ a renas unneg vloaz e Jeruzalem ; e vamm a oa anvet Zebida, merh Fadaia euz a Ruma.

37. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, e kement m'o-doa greet e dadou.

XXIV. Pennad.

Ar re genta euz a bobl Jeruzalem a zo dezouget da Vabilon.

1. E deiziu Joakim e pignas Nabukodonosor, roue Babilon, ha Joakim a oe lakaet dindan e halloud e-pad tri bloaz ; hag eñ a zavas adarre en e eneb.

2. Hag an Aotrou a gasas dezañ euz a Galdea, ha laeron euz a Ziria, ha laeron euz a Voab, ha laeron euz a vibien Ammon ; hag eñ o hasas a-eneb Juda, evid ma trehfent anezañ, hervez ar ger en-doa lavaret an Aotrou dre henou e zervijerien, ar brofeded.

3. Hogen an dra-mañ a hoarvezas dre her an Aotrou a-eneb Juda, evid e zisteurel a-zirazañ, en abeg d'an oll behejou en-doa greet Manasez.

4. Hag en abeg d'ar gwad dinamm en-doa skuillet, pa leunias Jeruzalem gand gwad ar re zianteg ; rag se eo ne fellas ket d'an Aotrou beza trugarezuz.

5. Oberiou all Joakim, ha kement en-deus greet, ha n'int ket skrivet e levr oberiou roueed Juda ? Ha Joakim a gouskas gand e daou :

6. Ha Joac'him, e vab, a renas en e leh.

7. N'ez eas mui a-neuze roue an Ejipt er-mêz euz e vro : rag roue Babilon en-

¹¹⁶ e oe lazet : Josias an hini eo a oe lazet.

doa kaset gantañ kement a oa bet da roue an Ejipt, adaleg ster an Ijpt beteg ar ster Euftrat.

8. Triweh vloaz en-doa Joac'him pa zeuas da reni. Hag eñ a renas tri miz e Jeruzalem : e vamm a oa anvet Nohesta, merh Elnatan euz a Jeruzalem.

9. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou e kement m'en-doa greet e dad.

10. En amzer-ze e savas servijerien Nabudokonosor, roue Babilon, a-eneb Jeruzalem ; hag i a reas douveziou war-dro da gêr.

11. Ha Nabudokonosor, roue Babilon, a zeuas ivez a-eneb kêr gand e zervijerien, evid stourmi outi.

12. Ha Joachin, roue Juda, a yeas er-mêz etrezeg roue Babilon, eñ hag e vamm, hag e zervijerien, hag e briñsed, hag e spazeien : ha roue Babilon a zegemeras anezañ eun eizved bloaz euz e ren.

13. Hag eñ a gasas gantañ ahano oll deñzoriou ti an Aotrou, ha teñzoriou ti ar roue : hag e torras an oll listri aour en-doa greet Salomon, roue Izrael, e templ an Aotrou, hervez m'en-doa lavaret an Aotrou.

14. Hag eñ a zezougas oll Izrael, hag an oll briñsed, hag ar re galoneka euz an arme, deg mil sklav, hag an oll vicherourien hag ar vañsonerien : ha ne lezas er vro nemed ar re baourra euz ar bobl.

15. Kas a reas ivez gantañ da Vabilon Joac'hin, ha mamm ar roue, ha gwragez ar roue, hag e spazeien : kas a ereas ivez da sklaved barnerein ar vro euz a Jeruzalem da Vabilon.

16. Hag an oll dud kreñv, seiz mil, hag ar vicherourien hag ar vañsounerien, mil, hag an oll re galoneg hag ar vrezilidi ; roue Babilon o hasas da sklaved da Vabilon.

17. Hag eñ a lakaas da roue e leh Joac'hin, Mattanias e eontr ; hag e halvas anezañ Sedesias.

18. Eur bloaz warn-ugent en doa Sedesias pa zeuas da reni ; hag eñ a renas unneg vloaz e Jeruzalem ; e vamm a oa anvet Amital, merh Jeremias euz a Lobna.

19. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, e kement m'en-doa greet Joakim.

20. Rag mond droug a ree en Aotrou mui-oh-vui ouz Jeruzalem hag ouz Juda, ken na zsitaolas anezo a-zirazañ : ha Sedesias en em dennas euz a-zindan galloud roue Babilon.

XXV. Pennad.

Nabuzardan a laka an tan e Jeruzalem.

1. En naved bloaz euz a ren Sedesias, en degved miz, e teuas Nabudokonosor, eñ hag e oll arme, a-eneb Jeruzalem, hag a hronnas anezi : hag i a reas douveziou war-dro dezi.

2. Hag ar gêr a oe gronnet ha kelhiet, beteg an unnegved bloaz euz ar roue Sedesias ;

3. Hag an naved deiz euz ar miz, eun naonegez vraz a zavas e kêr, ha ne oa ket a vara evid pobl ar vro.

4. Ha mur kêr a oe difreuzet : hag an oll vrezilidi a dehas a-zoug an noz dre hent ar porz kêr a zo etre diou vur war-zu garz¹¹⁷ ar roue ; (hogen ar Galdeed a

¹¹⁷ garz : liorz.

hronne kêr tro-war-dro) : Sedesias a dehas eta dre an hent a gas da gompezennou an distro.

5. Hag arme ar Galdeed a yeas war-lerh ar roue : hag e kemerjont anezañ e kompezenn Jeriko ; hag an oll vrezelidi a oa gantañ a oe skignet hag a zilezas anezañ.

6. Goude eta beza kemeret ar roue, e kasjont anezañ da roue Babilon e Reblata : hag hemañ a varnas anezo.

7. Mibien Sedesias a oe lazet dirag o zad ; tarza a reas e zaoulagad dezañ en e benn¹¹⁸, e erea a reas gand chadennou, hag a kasas anezañ gantañ da Vabilon.

8. En naontegved bloaz euz a roue Babilon, er pempved miz, er seizved deiz euz ar miz, Nabuzardan, priñs an arme, servijer roue Babilon, a zeuas da Jeruzalem.

9. Hag eñ a zevas ti an Aotrou ha ti ar roue : oll diez Jeruzalem a loskas ivez gand an tan.

10. Oll arme ar Galdeed, a oa gand ar priñs-se, a ziskaras muriou Jeruzalem tro-war-dro.

11. Hogen Nabuzardan, priñs an arme, a gasas gantañ ar re euz ar bobl a oa chomet e kêr, hag an deherien a oa eet etrezeg roue Babilon, hag an dud all.

12. Ne lezas nemed ar re baourra euz ar vro evid laboura ar gwini hag ara ar parkou.

13. Ar Galdeed a dorras ar peuliu arem a oa e tmpl an Aotrou, hag ar skeudennou, hag ar mor arem, a oe e ti an Aotrou ; hag i a gasas an arem oll da Vabilon.

14. Kas a rejont ivez ar haoteriou arem, hag ar paliou, hag ar ferierigou, hag ar hopou, hag al listri-breo, hag an oll listri arem, a bere en em zervijent.

15. Priñs an arme a gasas ivez gantañ an ezañsouerou, hag ar boestou-ezañs, ken ar re greet gand aour, ken ar re greet gand arhant ;

16. Hag ivez an daou beul, hag ar mor, hag ar steudennou en-doa greet Salomon e templ an Aotrou. Ha pouez an arem euz an oll listri-ze ne oad ket evid e niveri, ker braz e oa.

17. Unan euz an daou beul en-doa triweh ilinad a uhelder ; ha warnezañ eur penn arem a dri ilinad a uhelder : ha war ar penn peul eur rouedig hag avalou-grenad, hag oll a arem. An eil peul en-doa an heveleb kempenn-durezou.

18. Priñs an arme a gasas ivez gantañ Saraias, ar beleg-braz, ha Sofonias, an eil-beleg, hag an tri forzier ;

19. Hag eur spaz euz a gêr, pehini a oa rener euz an dud a vrezel ; ha pemp den euz ar re a oa bepred dirag ar roue, hag a gavas e kêr ; ha Sofer, priñs an arme, pehini a zeske ar zoudarded nevez a gemered euz a bobl ar vro ; ha tri-ugent den euz ar bobl a oa bet kavet e kêr.

20. Nabuzardan, priñs an arme, a gasas ar re-mañ da roue Babilon e Reblata.

21. Ha roue Babilon a lakaas skei ganto, hag o laza e Reblata, e bro Emat ; ha Juda a oe kaset er-mêz e vro.

22. Hogen Nabukodonosor, roue Babilon, a lakaas da rener war ar bobl en-doa lezet e bro Juda, Godolias, mab Abikam, mab Safan.

23. Pa glevas oll ofiserien ar vrezelidi, i hag an dud a oa ganto, penaoz en-doa roue Babilon lakaet da rener Godolias, hag Ismael, mab Natantias, ha Johanan,

¹¹⁸ tarza a reas e zaoulagad dezañ en e benn : tarzet e oe ... ; e erea a reas gand chadennou, e oe ereet... ; hag a kasas hag e oe kaset... anezañ gaantañ da Vabilon.

mab Karee, ha Saraia, mab Tanehumet an Netofatit, ha Jezonias, mab Maac'hati, i a zeuas da gavoud Gogolias e Masfa, i hag o zud.

24. Ha Godolias a douas dezo ha d'ar re a oa ganto, o lavaroud : N'ho-pezet ket a aon o servija ar Galdeed ; chomit er vro, ha servijit roue Babilon, hag e vezo da ganeoh.

25. Er seizved miz, e teuas Ismahel, mab Natantias, mab Elisama euz a ouenn ar roueed, ha deg den gantañ : hag i a skoas gand Godolias ken na varvas, hag ivez gand ar Iuzevien hag ar Galdeed a oa gantañ e Masfa.

26. Hag an oll bobl, euz an disterra beteg ar brasa, ha priñsed ar vrezilidi, a yeas d'an Ejipt, o veza m'o-doa aon rag ar Galdeed.

27. Hogen er seizved bloaz ha tregont ma oe kaset Joac'hin, roue Juda, er-mêz euz e vro, en daouzegved miz, er seizved deiz euz ar miz, Evilmerodac'h, roue Babilon, er bloaz e pehini e teuas da reni, a dennas Joac'hin, roue Juda, euz ar vah.

28. Hag a gomzas outañ gand madelez ; hag e lakaas e dron dreist tron ar roueed a oa gantañ e Babilon.

29. Nevezi a reas an dillad en-doa er vah, hag e lakaas anezañ da zebri e voued dirazañ 'hed an oll zeziou euz e vuhez.

30. Kretaad a reas ivez evid e vevañs bepred, hag e oe roet dezañ bemdez gand ar roue 'hed an oll zeziou euz e vuhez.

AR PARALIPOMENON

LEVR KENTA

I. Pennad.

Nested Adam, Abraham hag e vibien, ha roueed Edom

1. Adam, Seth, Enos,
2. Kainan, Malaleel, Jared,
3. Henoc'h, Matusale, Lamec'h,
4. Noe, Sem, Kam, ha Jafeth.
5. Mibien Jafed : Gomer, ha Magog, ha Madai, ha Javan, Tubal, Mosoc'h, Tiras.
6. Hogen mibien Gomer : Asenez, ha Rifat, ha Togorma.
7. Hogen mibien Javan : Elisa, ha Tarsis, ha Setim, ha Dodanim.
8. Mibien Kam : Kus, ha Mesraim, ha Fut, ha Kanaan.
9. Hogen mibien Kus : Saba, hag Hevila, Sabata, ha Regma, ha Sabatac'ha. Hogen mibien Regma : Saba, ha Dadan.
10. (*Hag e se a-hed gand anoiou tud. Lakaet e vo ar pennadou a vefe mad da lenn evidom*).

II. Pennad.

Nested Jakob, Hesron ha Kaleb.

(Memez mod).

7. Mibien Karmi : Ac'har, pehini a lakaas ar reustl e Izarel, hag a behas gand laeroñsi an anaoue.

III. Pennad.

Nested David hag ar roueed Juda euz a ouenn David.

(Memez mod).

9. Ar re-ze oll a zo mibien David ; heb niveri mibien e zerhed ; hag eur hoar o-doe, anevt Tamar.

IV. Pennad

Nested Juda. Mibien Simeon.

(Memez mod).

9. Hogen Jabez a oe brudet-braz e-touez e vreudeur, hg e vamm eo a roas dezañ an ano a Jabez, o lavaroud : O veza ma em-eus e hanet er hloaz.

10. Ha Jabez a bedas Doue Izrael, o lavaroud : Mar bennigez ahanon, ha ma astennez va harzou, ha ma ema da zorn ganen, ha ma virez ma ven mahet gand an dougiez. Ha Doue a aotreas dezañ ar pezh en-doa goulennet.

(Memez mod).

38. Ar re-ze eo ar briñsed vrudet-braz en o herentiezou ; hag i a greskas kalz e niver e ti o nestedou.

39. Hag i a yeas en hent evid mond e-barz Gador ha beteg ar sav-heol euz an draonienn, hag evid klask peuri d'o loened.

40. Hag i a gavas peuri strujuz hag euz ar re wella, hag eun douar ehon, a oa peoh ha frouez ennañ, e pehini e chome kent eur re bennag euz a ouenn Kam.

41. Ar re-mañ eta, a bere on-eus lavaret kent an anoïou, a zeuas e amzer Ezekias, roue Juda ; hag i a ziskaras o zeltou, a lazas ar re a chome enno, hag a zispennas anezo bete-vremañ. Hag i a zo chomet en o leh, en abeg d'ar peuri strujuz-braz o-deus kavet eno.

42. Pemp kant den euz a vibien Simeon a yeas ivez war-zu menez Seir, dindan ar priñs Faltias, ha Naarias, ha Rafaias, hag Oziel, mibien Jesi.

43. Hag i a drehas ar re euz an Amalekited o-doa gellet tehoud ; hag int chomet en o leh beteg-henn.

V. Pennad.

Nested Ruben, Gad, hag hanter-vreudeur Manase.

(Memez mod).

1. Setu amañ mibien Ruben, mab-hena Izrael, (rag eñ eo a oa e vab-hena : hogen, o veza m'en-doa saotret gwele e dad¹¹⁹, e wir-henanded a oe roet da vibien Jozef, mab Izrael, ha Ruben ne oa mui sellet evel ar mab-hena.

2. Hogen Juda a oa ar haloneka euz e oll vreudeur ; ha priñsed a zo savet euz e ouenn ; hogen ar gwir-henanded a oe miret da Jozef-.

3. Bera e vab, pehini a oa priñs war vreuriezh Ruben, hag a oe kaset e sklaverez gand Telgatfalnasar, roue an Aisried.

(Memez mod).

10. Hogen e deizioù Saul e stourmjont ouz an Agareed, e lazjont anezo, hag e chomjont en o zeltou en o leh, en oll vro a zell ouz ar sav-heol euz a Halaad.

(Memez mod).

18. Mibien Ruben ha Gad, hag hanter-vreudeur Manase a oe tud a-vrezel, pere a zouge an direnn hag ar hleze, a stegne ar wareg, hag a oa gouizieg er stourmou. Pa'z eent d'ar brezel, ez oant pevar mil ha daou-ugent mil seiz-kant ha tri-ugent¹²⁰.

19. Stourmi a rejont ouz an Agareed, da bere an Itureed ha er Nafis ha Nodab,

20. A roas skoazell. Hag an Agareed, gand ar re oll a oa ganto, a gouezas etre o daouarn, o veza m'o-doa galvet Doue e-kreiz an emgann ; hag eñ a zelaouas

¹¹⁹ m'en-doa saotret gwele e dad : ?

¹²⁰ pevar mil ha daou-ugent mil seiz-kant ha tri-ugent :44.760.

anezo, dre m' o-doa kredet ennañ.

21. Hag i a gemeras kement ha m' o-doa ar re-mañ ; hanter-kant mil kañval, ha daou-hant hag hanter-kant mil dañvad, ha daou vil azen, ha kant mil den.

22. Kalz euz ar re a oa bet gloazet a varvas ivez : rag brezel an Aotrou e oa. Hag i a chomas en o leh beteg ma oant kaset kuit euz ar vro-ze.

23. Mibien hanter-vreuriez Manase a chomas ivez en douarou a zo adaleg harzou Basan beteg Baal, hag Hermon, ha Sanir, ha menez Hermon, o veza ma oa eun niver braz anezo.

24. Hag ar re-mañ a oe ar briñsed euz o zadou hag euz o herentiezou : Efer, ha Jesi, hag Eliel, hag Ezriel, ha Jeremia, hag Odoia, ha Jediel, tud kreñv ha galloudeg, ha brudet-braz e-touez an duged euz o ziadou.

25. Koulskodue e telezjont Doue o zadou, hag en em zaotrjont gand doueed poblou an douar, en-doa Doue bevezet dirazo.

26. Ha Doue Izrael a lakaas da zevel spered Ful, roue an Asiried, ha spered Telgarfalnasar, roue Asur, hag hemañ a lakaas da gregi e breuriez Ruben, hag e breuriez Gad, hag e hanter-vreuriez Manase, hag e kasas anezo da Lahela, ha da Habor, ha da Ara, e ribl ar ster Gozan, bete-vremañ.

VI. Pennad.

Nested Levi.

(Memez mod).

VII. Pennad.

Nested Isakar, Benjamin, Manase, Efraim hag Aser.

(Memez mod).

2. Mibien Tola : Ozi, ha Rafata, ha Jeriel, ha Jemai, ha Jebsem, ha Samuel, priñsed e tiez o herentiezou. Euz a ouenn Tola e oe niveret e deziou David, daou vil den warn-ugent ha c' hweh-kant, oll tud euz ar re galoneka.

3. Ha ganto hervez o ziadou hag o foblou c' hweh mil den ha tregont mil, tud kaloneg-braz ha dare d' ar brezel ; rag kalz a wragez hag a vugale o-doa bet.

4. Hag ivez o breudeur hervez oll gerentiez Isakar, d' an niver euz a zeiz mil den ha pevar-ugent mil, tud kreñv-braz evid ar brezel.

5. Mibien Blaz : Esbon, hag Ozi, hag Oziel, ha Jerimot, hag Urai, pemp priñs a diadou, ha kreñv-braz evid ar brezel ; hogen an niver anezo a oa euz a zaou vil den warn-ugent pevar ha tregont¹²¹.

(Memez mod).

9. Hogen an niver anezo hervez o ziadou, ha priñsed o herentiezou, a oa euz a ugent mil den ha daou-hant, kreñv-braz evid ar brezel.

11 Ar re-ze oll mibien Jahidel, pere a oa priñsed o herentiezou, d' an niver a

¹²¹ euz a zaou vil den warn-ugent pevar ha tregont : 22.034.

zeiteg mil ha daou-hant, tud kaloneg-braz, ha dare d'ar brezel.

(Memez mod).

21. Ha Sutala e vab, hag Ezer hag Elad e vibien ; hogen tud Get a lazaz anezo, o veza ma oant diskennet ha m'o-doa skrapet o douarou.

(Memez mod).

40. Ar re-ze oll mibien Aser, priñsed o herentiezou, tud dilennet ha kaloneg-braz e-touez an duged. An niver euz ar re a oa en oad da vond d'ar brezel a oa euz a hweh mil warn-ugent¹²².

VIII. Pennad.

Nested Benjamin, ha nested Saul.

(Memez mod).

6. Hogen Sharaim a engehentas e bro Moab, goude beza kaset kuit Husim ha Bara e wragez.

13. Hogen Baria ha Sama a oe priñsed kerentiezou ar re a chome e Aialon : ar re-ze eo a gasas kuit ar re a chome e Get.

IX. Pennad.

Karg al Levited.

(Memez mod).

1. Izrael oll a oe eta niveret ; hag an niver anezo a oe skrivet e levr roueed Izrael ha Juda. Hag i a oe kaset da Vabilon en abeg d'o fehejou.

2. Hogen ar re genta a chomas en o madou, hag en o hêriou, a oe Izrael¹²³, hag ar velein, hag al Levited, hag an Natineed.

3. Chom a reas e Jeruzalem euz a vibien Juda, hag euz a vibien Benjamin, hag euz a vibien Efraim, hag euz a Vanase ;

4. Otei, mab Ammiud, mab Amri, mab Omrai, mab Bouni, euz a vibien Farez, mab Juda.

5. Hag euz a Ziloni : Azaia, e vab-hena, hag e vibien.

6. Euz a vibien Zara : Jehuel hag e vreudeur, c'hweh-kant deg ha pevar-ugent.

7. Euz a vibien Benjamin : Salo, mab Mosollam, mab Oduia, mab Asana.

8. Ha Johania, mab Jeroham, hag Ela, mab Ozi, mab Moc'hori, ha Mosollam, mab Safatias, mab Rahuel, mab Jehanias ;

9. Hag o breudeur hervez o ziadou, nao-hant c'hweh hag hanter-kant. Ar re-mañ oll, priñsed ar herentiezou e tiez o zadou.

¹²² a hweh mil warn-ugent : 26.000.

¹²³ Izrael : tud euz a Izrael.

10. Hogen euz ar veleien : Jedaia, ha Joirib, ha Jac'hin.
11. Hag o breudeur pere a oa priñsed en o ziadou, mil seiz-kant ha tri-ugent, tud kreñv ha galloudeg e-keñver ar servij o-doa da ober e ti Doue.
12. Beteg an amzer-ze, lod euz a vibien Levi o-doa diwallet dor ar roue war-zu ar sav-heol, pep hini d'o zro.
13. Hogen Sillum, mab Kore, mab Abiasaf, mab Kore, gand e vreudeur ha ti e dad ; ar re-ze eo ar Horeaded a oe lakaet war labouriou ar servij, evid diwalloud doriou an tabernakl ; hag o ziadou a ziwalle, pep hini d'e dro, an nor euz a gambr an Aotrou.
14. Hogen Fineez, mab Eleazar, a oa o dug¹²⁴ dirag an Aotrou.
15. Zakarias, mab Mosollamia a oa porzier dor tabernakl an testeni.
16. Ar re-ze oll pere o-doa karg da ziwalloud doriou an templ, a oa daouhant ha daouzeg ; o anoiou a oa skrivet en o hêriou o-unan. David ha Samuel ar gweler, o-doa o lakaet hervez o fealded.
17. Kerkoulz i hag o mibien, evid diwalloud d'o zro doriou ti an Aotrou, ha re an tabernakl.
18. Er pevar avel en em gave ar borzierien, da lavaroud eo, er sav-heol, hag er huz-heol, hag en hanternoz, hag er hreisteiz.
19. Hogen o breudeur a chome er bourhiou, hag a zeue da ober karg o zabatou¹²⁵ pep hini d'e dro.
20. D'ar pevar Levit-se edo ar veli war an oll borzierien, ha dezo e oa ivez ar preder euz ar hambrou hag euz an teñzoriou euz a di an Aotrou.
27. Chom a reent war-dro da dempl an Aotrou evid e ziwalloud, hag evid digeri an doriou diouz ar mintin, pa oa deuet ar pred.
28. Bez' e oa ivez euz ar re-ze o-doa ar preder euz a listri ar servij ; rag al listri a oa kaset ha degaset diouz an niver.
29. Dar re-mañ, ha d'ar re o-doa e karg listri ar santuar, e roer ar preder euz ar bleud, hag euz ar gwin, hag euz an eoul, hag euz an ezañs, hag euz al louzou c'hwez-vad.
30. Hogen mibien ar veleien a aoze al louzou c'hwez-vad.
31. Matatias al Levit, mab-hena Sillum ar Horead, a oa e penn ar re a lakae da frita ar billig.
32. Hogen hiniennou euz a vibien Kaat, o breudeur, o-doa ar garg euz ar baraou-kinnig, evid aoza baraou nevez de bep Sabbat.
33. Ar re genta euz ar ganerien e tiadou al Levited, eo ar re a chome er hambrou evid ma helljent ober bepred o harg noz-deiz.
34. Pennou al Levited, pere a oa priñsed en o ziadou, a chome e Jeruzalem.
34. Hogen e Gabaon e chome Jebiel, tad Gabaon, hag e wreg, anvet Maac'ha.
38. Hogen Masellot a oe tad Samaan ; ar re-mañ a chomas e Jeruzalem gand o breudeur, rag eneb d'o breudeur all.
39. Hogen Ner a oe tad Kis ; ha Kis a enghentas Saul ; ha Saul a enghentas Jonatan, ha Melkisua, hag Abinadab, hag Esbaal.
-

X. Pennad.

¹²⁴ dug : e penn anezo.

¹²⁵ o zabatou : e-pad seiz devez.

Maro Saul hag e vibien.

1. Hogen ar Filistined a stourmas a-eneb Izrael, ha tud Izrael a dehas dirag ar Filistined, ha kalz anezo a oe lazet war menez Gelboe.
2. Hag ar Filistined o veza eet war-lerh Saul hag e vibien, a lazas Jonatan ; hag Abinadab, ha Melkisua, mibien Saul.
3. Hag ar stourm a wasaas a-eneb Saul ; ar waregerien en em gavas gantañ, hag a zankas o zaeou ennañ.
4. Ha Saul a lavaras d'e floh : Dihouin da gleze, ha laz ahanon, gand aon na zeufe ar re zieuwadet-se da ober goap ahanon. Hogen e floh, spontet-braz, ne fellas ket dezañ e ober. Saul eta a gemeras e gleze e-unan, hag en em daolas warnezañ.
5. Pa welas ar floh penaoz e oa maro Saul, en em daolas ivez ar e gleze e-unan, hag e varvas.
6. Saul eta a varvas, hag ivez e dri mab ; hag e oll di a gouezas ivez gantañ.
7. Pa welas kement-se mibien Izrael, pere a chome er mêziou, e tehjont ; ha Saul hag e vibien o veza maro, e tilezjont o hêriou, hag en em skignjont tu-mañ ha tu-hont. Hag ar Filistined a zeuas, hag a chomas en o lehiou.
8. Antronoz pa edo ar Filistined o tiwiska ar re a oa bet lazet, e kavjont Saul hag e vibien gourvezet war menez Gelboe.
9. Ha goude m'o-doe e ziwisket, ha trohet e benn, ha kemeret e armou, o hasjont d'o bro, evid ma vijent kaset tu-mañ ha tu-hont, ha diskouezet d'ar bobl hag e templou an idolou.
10. Hogen gouestla a rejont e armou e templ o doue, hag e stagjont e benn ouz templ Dagon.
11. Pa glevas tud Jabez-Galaad ar pez o-doa greet ar Filistined da Zaul,
12. Ar re galoneka anezo a zavas, hag a skrapas korvou maro Saul hag e vibien ; hag i o degasas da Jabez, hag a vezias o eskern dindan an dervenn a oa e Jabez ; hag i a yunas e-pad seiz devez.
13. Saul eta a varvas, en abeg d'e fallagriezou, o veza m'en-doa torret ar gourhemennou en-doa greet an Aotrou dezañ, ha n'en-doa ket o miret, hag o veza ouspenn m'en-doa goulennet kuzul digand an diouganerez.
14. Ha n'en-doa ket lakaet e fiziañs en Aotrou : rag se eo hel lakaas Doue da vervel, hag e roas e rouantelez da Zavid, mab Isai.

XI. Pennad.

Eouliet eo David. Kemeret eo gantañ Jeruzalem.

1. Oll bobl Izrael a zeuas eta da gavoud David e Hebron, hag a lavaras dezañ : Ni a zo da eskern ha da gig.
2. Ha deh ivez hag en derhent, pa rene c'hoaz Saul, te eo a gase hag a zegase Izrael ; rag dit eo en-deus lavaret an Aotrou, da Zoue : Te a basko va fobl a Izrael, ha te a vezo priñs warnezi.
3. Oll henaoured Izrael a zeuas eta da gavoud ar roue e Hebron : ha David a reas kevredigez ganto dirag an Aotrou ; hag i a eoulias anezañ da roue war Izrael,

hervez ar ger en-doa lavaret an Aotrou dre henou Samuel.

4. Ha David hag Izrael oll a yeas etrezeg Jeruzalem ; a zo ivez anvet Jebus, e peleh e chome ar Jebuseed.

5. Hag ar re a chome e Jebus a lavaras da Zavid : Ne zeui ket amañ. Hogen David a gemeras kreñv Sion, a zo kêr David.

6. Hag eñ a lavaras : Neb en-devezo trehet da genta ar Jebuseed, a vezo lakaet da briñs ha da zug. Joab, mab Sarvia, o veza eta pignet da genta, a oe lakaet da briñs.

7. Hogen David a yeas da chom er hreñv, ha dre ze e oe anvet kêr David.

8. Hag eñ a zavas eur gêr war-dro, adaleg Mella beteg ar penn all ; ha Joab a zavas an dilerh euz ar gêr.

9. Ha David a greske e halloud, o vond a-raog hag o kreñvaad, hag Aotrou an armeou a oa gantañ.

10. Setu amañ ar re genta euz a dud kaloneg David, pere a skoazellas anezañ evid beza roue war Izrael oll, hevez ar ger en-doa roet an Aotrou da Izrael.

11. Ha setu amañ an niver euz a dud kreñv David. Jesbaam, mab Hac'hamoni, priñs war tregont¹²⁶ ; hennez a zavas e hoaf war tri-hant, pere a hloazas en eur wech.

12. Hag e-houde Eleazar Ahohiad, mab e eontr, pehini a oa etre an tri halloneka.

13. Hemañ a oa gand David e Fesdomin, pa en em strollas ar Filistined el leh-se evid an emgann ; ha parkou al leh-se a oa leun a heiz, hag ar bobl o veza tehet a-zirag ar Filistined,

14. Ar re-mañ a chomas stard e-kreiz ar parkou, hag a zivennas anezo. Ha goude m'o-doa trehet ar Filistined, an Aotrou a roas eun eurvad d'e bobl.

15. Hogen tri euz an tregont priñs a ziskennas etrezeg ar roh war behini edo David, e-kichenn keo Adollam, pa stegnas ar Filistined o hamp e traonienn Efraim.

16. Hogen David a oa en e greñv, ha kastell ar Filistined a oa e Betlehem.

17. David en-doe sehed, hag a lavaras : O ! ma rofe unan bennag din dour euz a buñs Betlehem, a zo e-tal ar porz !

18. An tri-ze eta a gerzas a-dreuz da gamp ar Filistined, hag a dennas dour euz a buñs Betlehem, a oa e-tal ar porz ; hag e tegasjont anezañ da Zavid evid eva : hogen ne fellas ket dezañ e ober, hag e oe gwell gantañ e ginnig d'an Aotrou,

19. O lavaroud : Doue ra viro ma rin an dra-ze dirazañ, ha ma evin gand an dud-se, pere o-deus degaset an dour-ze din war o buhez. Hag evid-se ne fellas ket dezañ eva. Setu petra a reas an tri den kaloneg-se.

20. Abisal, breur Joab, a oa ar henta euz an tri-ze ; eñ eo a zavas e hoaf war dri-hant den a lazas, hag eñ a oa brudet-braz etrezo o-zri,

21. Hag ar vrudeta euz an tri eil¹²⁷, hag ar priñs anezo. Koulskoude ne oa ket par d'an tri henta.

22. Banaias euz a Gabreel, mab Joiada, den kaloneg-braz, a reas meur a dra gaer ; eñ eo a lazas an daou Ariel euz a Voab : hag eñ eo a ziskennas en eur puñs seh, e-kreiz an arh, hag a lazas eno eul leon.

23. Eñ eo ivez a lazas eun Ejiptian a bemp ilinad a uhelder, pehini en-doa eur goaf evel karvan ar wiaderien. Diskenni a reas d'e gavoud gand eur wialenn ;

¹²⁶ war tregont : war tregont den.

¹²⁷ an tri eil : an tri war-lerh an tri henta.

skrapa a reas ar goaf a oa en e zorn, hag e lazas anezañ gand e hoaf e-unan.

24. Setu petra a reas Banaias, mab Joiada, pehini a oa brudet-braz etre an tri den kaloneg.

25. Hag ar henta etre an tregont. Koulskoude ne oa ket par d'an tri henta : hogen David hel lakaas e penn e warded.

26. Hogen ar re galoneka en arme, a oa Asahel, breur Joab, hag Elkanan, mab e contr, euz a Vetlehem.

27. Sammot euz a Arori, Hellez euz a Faloni,

28. Ira... (*amañ eur bern anoiou*).

XII. Pennad.

Tud kaloneg pere a yeas da heul David e Siseleg hag e Hebron.

1. Ar re-mañ a zeuas ivez da gavoud David e Siseleg, pa dehe c'hoaz dirag Saul, mab Kis : tud kreñv-braz 'oant, ha mad evid ar brezel,

2. A denne gand ar wareg, hag a daole mein gand ar vatalm, hag a vanne saeziou gand an eil dorn ha gand egile : breudeur e oant da Zaul hag euz a Venjamin.

3. Ar henta anezo Ahiezer, ha Joas, mibien Samaa, euz a Habaat, ha Jazile, ha Fallet, mibien Azmot, ha Barac'ha, ha Jehu euz a Anatot,

4. Ha Samaias euz a Habaou, ar haloneka etre an tregont, hag ar penn euz an tregont ; Jeremias, ha Jeheziel, ha Johanan, ha Jezabad euz a Chaderot,

5. 6, 7 (*anoiou tud*)

8. Bez' e oe ivez tud euz a C'haddi, pere a yeas da gavoud David, pa oa kuzet en distro, tud kaloneg-braz, hag euz ar re wella evid ar brezel, pere a zouge an direnn hag ar goaf ; o dremm a oa heñvel oh dremm loened ; hag i a oa buan evel gevr ar menezioù.

9. Ezer ar henta, Abdias an eil, Eliab an trede,

10. 11, 12, 13 (*anoiou tud*).

14. Ar re-mañ a oa mibien Gad, ha priñsed an arme : an disterra a oa e penn kant brezeliad, hag an uhella e penn mil.

15. Ar re-mañ eo a dreuzas ar Jourdan er miz kenta, pa eo boazet da zihlanna ; hag i a lakaas da dehou ar re a chome en traoniennou war-zu ar sav-heol ha war-zu ar huz-heol.

16. Dond a reas ivez tud euz a Venjamin hag euz a Juda, da gavoud David er hreñv e pehini e oa en em dennet.

17. Ha David a yeas d'o diambroug, hag a lavaras dezo : Mar deuit e peoh etrezeg ennon evid va hennerza, va halon a vezo a-unan ganeoh ; hogen mar deuit a-berz va enebourien evid va zouella, petra bennag ma'z eo dizroug va daouarn, ra zello Doue on tadou, ha ra varno.

18. Hogen ar spered a zeuas war Amarai pehini a oa da benn war tregont, hag eñ a lavaras : Dit om, o David ! ha ganez, mab Isai ; peoh, peoh dit, ha peoh d'ar re a gennerz ahanout ; rag da Zoue eo a zo da gennerz dit. David eta o degemeraz, hag a lakaas anezo da briñsed en e arme.

19. Lod ivez euz a Vanase a droas etrezeg David, pa'z ee gand ar Filistined evid stourmi a-eneb Saul ; petra bennag n'en em gannas ket ganto, rag priñsed ar

Filistined o veza en em strollet, a vannas anezañ, o lavaroud : E gwall or pennou¹²⁸ e tistroy etrezeg Saul e vestr.

20. Pa zsitroas eta da Ziseleg, ar re-mañ a droas etrezeg ennañ euz a Vanase : Ednas, ha Jozabad, ha Jedihel, ha Likael, hag Ednas, ha Jozabad, hag Eliu, ha Salati, pere a oa priñsed ar mil a Vanase.

21. I a roas kennerz da Zavid a-eneb al laeron : rag tud kaloneg-braz e oant oll, hag e oent lakaet da briñsed an arme.

22. Dond a ree bemdez eul lod braz a dud da gavoud David, hag evid e gennerza ; hag e arme a zeuas da veeza braz evel arme Doue.

23. Setu amañ an niver euz a briñsed an arme a zeuas da gavoud David, pa edo e Hebron, evid rei dezañ rouantelez Saul, hervez ger an Aotrou.

24. Euz a vibien Juda, pere a zouge an direnn hag ar goaf, c’hweh mil hag eiz-kant, dare d’ar brezel.

25. Euz a vibien Simeon, tud kaloneg-braz evid an emgann, seiz mil ha kant.

26. Euz a vibien Levi, pevar mil ha c’hweh-kant.

27. Ha Joiada, priñs euz a ouenn Aaron, ha gantañ tri mil ha seiz-kant.

28. Ha Sadok, paotr euz a eur vuhezegez vad, ha ti e dad, daou briñs warn-ugent.

29. Hag euz a vibien Benjamin, breudeur Saul, tri mil ; rag eul lod braz anezo a heulie c’hoaz ti Saul.

30. Hag euz a vibien Efraim, ugent mil hag eiz-kant : tud kreñv-braz ha brudet en o herentiezou.

31. Hag euz a hanter-vreuriez Manase, triweh mil, pere a zeuas pep hini en e ano evid lakaad David da roue.

32. Hag euz a vibien Isakar, tud desket-mad, pere a anaveze an oll amzeriou, evid gourhemenni da Izrael ar pez a dlee da ober, daou-hant priñs ; hag ar re all euz ar vreuriez a heulie o ali.

33. Hag euz a Zabulon, pere a oa tud-a-vrezel, a oa bepred o armou ganto, ha dare d’an emgann, e teuas hanter-kant mil da gennerza dezañ, hag i a galon vad.

34. Hag euz a Neftali, mil priñs ; ha ganto seiz mil ha tregont a ouie stourmi gand an direnn ha gand ar goaf.

35. Hag euz a Zan, eiz mil warn-ugent ha c’hweh-kant, dare d’an emgann.

36. Hag euz a Aser, daou-ugent mil, a gerze d’ar stourm, hag a oa dare d’an emgann.

37. Hag euz a en tu all euz ar Jourdan, euz a vibien Ruben, euz ar Had, hag euz a hanter-vreuriez Manase, c’hweh-ugent mil gand armou brezel.

38. An oll vrezelidi-ze dare d’an emgann, a zeuas da Hebron a galon vad, evid lakaad David da roue war Izrael oll ; hag ar re all oll euz a Izrael ne houlenent ket gwell eged ma vije lakaet David da roue.

39. Hga i a chomas eno tri devez e-keñver David, o tebri hag oh eva ; rag o breudeur o-doa aozet pep tra dezo.

40. Hag ivez ar re a oa war o zro, beteg Isakar da Zabulon, ha Neftali, a zegase bara war azened, ha war kañvaled, ha war muled, ha war ejenned, evid o maga ; ha bleud, ha figez, ha rezin seh ; ha gwin, hag eoul, hag ejenned ha deñved, ha pep tra gand fonnder ; rag levenez a oa e Juda.

¹²⁸ E gwall or pennou : e riskl or pennou.

XII. Pennad.

David a zegas an arh euz a Gariatiarim. Maro Oza.

1. Hogen David a strollas e kuzul ar villinerien, hag ar gantenerien, hag an oll briñsed,
2. Hag a lavaras da oll strollad Izrael : Mar deo da ganeoh, ha ma teu digand an Aotrou, on Doue, ar pezh ez an da lavaroud deoh, kasom etrezeg or breudeur all oll vro Izrael, hag etrezeg ar veleien, hag al Levited, pere a chom e fabourziou ar hêriou, evid ma en em strollint ganeom ;
3. Ha ma tegasim adarre arh on Doue etrezeg ennom ; rag n'on-eus ket he hlasket e deiziou Saul.
4. Hag an oll strollad a lavaras e vije greet evel-se ; rag al lavar-ze a oa bet kavet mad gand an oll bobl.
5. David eta a strollas Izrael oll, adaleg Sihor en Ejipt, beteg hent Emat, evid degas arh Doue euz a Gariatiarim.
6. Ha David a bignas, hag Izrael oll gantañ, da greh Kariatiarim, a zo e Juda, evid degas ahano arh an Aotrou Doue a zo azezet war ar jerubined, hag e peleh eo galvet¹²⁹ o ano.
7. Hag i a zegasas arh Doue war eur harr nevez a di Abimadab ; hogen Oza hag e vreur a vlenie ar harr.
8. Ha David, hag Izrael oll a hoarie dirag Doue euz o oll nerz, gand o hanaouennou, ha gand telennou, ha gand lirennou, ha gand taboulinou, ha gand simbalou, ha gand korniou.
9. Hogen pa oant deuet war harz leur Chidon, Oza a astennas e zorn evid harpa an arh : rag eun ejenn o veza gwintet eun nebeud en-doa he lakaet da gosteri.
10. Droug a zavas eta en Aotrou a-eneb Oza, hag eñ a skoas gantañ, o veza m'en-doa lakaet e zorn war an arh : hag eñ a varvas eno dirag an Aotrou.
11. Glaharet e oe David, o veza ma oa bet skoet Oza gand an Aotrou ; hag eñ a halvas al leh-se : kastiz Oza, beteg-henn.
12. Hag eñ en-doe aon vraz rag an Aotrou en deiz-se, hag e lavaras : Penaoz e hellin-me degas arh Doue em zi ?
13. Rag se eo ne fellas ket dezañ he has d'e di, da lavaroud eo, e kêr David ; hogen lakaad a reas he distrei hag he has da di Obededom euz a Het.
14. Arh Doue a chomas eta e ti Obededom a-hed tri miz ; hag an Aotrou a vennigas e di, ha kement en-doa.

XIV. Pennad.

Gwragez ha mibien David.

1. Neuze Hiram, roue Tir, a gasas kannaded da Zavid, gand koad sedr : ha benerien vein, ha kilvizien, evid sevel eun ti dezañ.
2. Ha David a anavezaz penaoz en-doa an Aotrou e greteet da roue war Izrael

¹²⁹ galvet : anvet.

ha penaoz en-doa savet e rouantelez war e bobl a Izrael.

3. Ha David a gemeras gwraez all e Jeruzalem ; hag eñ en-doe mibien ha merhed.

4. Ha setu amañ anioù ar re a zo bet ganet dezañ e Jeruzalem : Samua, ha Sobab, ha Natan, ha Salomon,

5. Ha Jebahar, hag Elisua, hag Elifaelt,

6. Ha Noga, ha Nafeg, ha Jafia,

7. Hag Elisama, ha Baaliad, hag Efifaelt,

8. Pa glevas ar Filistined penaoz e oa bet eouliet David da roue war Izrael, e pignont oll evid e glaskoud. Pa glevas David kement-se, ez eas er-mêz d'o diarbenna.

9. Hogen ar Filistined a zeuas, hag en em skignas dre an draonienn Rafaim.

10. Ha David a houlennas kuzul digand an Aotrou, o lavaroud : Ha pigna a rin-me a-eneb ar Filistined, hag o lakaad a ri-te etre va daouarn ? Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Pign, ha me o lakay etre da zaouarn.

11. Pa oe eta pignet ar re-mañ da Vaalfarasim, e trehas eno David anezo, hag e lavaras : Skignet eo gand Doue va enebourien, evel ma eo skignet an doueier. Rag-se eo bet galvet al leh-se Baalfarasim.

12. Hag i a lezas eno o doueed, ha David a hourhemennas ma vijent devet.

13. Ar Filistined a reas eun argadenn eur wech all, hag i en em skignas dre an draonienn.

14. Ha David a houlennas adarre kuzul digand Doue ; ha Doue a lavaras dezañ : Na bign ket war o lerh, pella diouto ; hag e tistroi outo pa vezi rag-eneb d'ar gwez per.

15. Ha pa glevi evel trouz eur re o kerzoud war beg ar gwez per, neuze ez i d'an emgann : rag neuze en-devezo kerzet Doue en da raog, evid skei war gamp ar Filistined.

16. David a reas eta evel m'en-doa an Aotrou gourhemennet dezañ ; hag eñ a drehas ar Filistined, adaleg Gabaon beteg Gazer.

17. Hag ano David a oe brudet-braz dre an oll vroioù ; hag an Aotrou a lakaas spont diwar e benn e-touez an oll boblou.

XV. Pennad.

David a zañs e-raog an arh.

1. David a reas ivez tiez evitañ e kêr David ; hag e savas eul leh evid arh Doue, hag e stegnas eun telt eviti.

2. Ha David a lavaras : Ne dle den dougen arh Doue, nemed al Levited, en-deus dilennet an Aotrou evid he dougen, hag evid ober ar servij anezi da viken.

1. Hag eñ a strollas Izrael oll e Jeruzalem, evid degas arh Doue d'al leh en-doa aozet eviti.

2. Gervel a reas ivez mibien Aaron, hag al Levited.

3. Euz a vibien Kaat : Uriel ar priñs, hag e vreudeur, c'hweh-ugent.

4. Euz a vibien Merari : Asaia ar priñs, hag e vreudeur, deg ha c'hweh-ugent.

5. Euz a vibien Gerson : Joel ar priñs, hag e vreudeur, daou-hant.

6. Euz a vibien Elisafan : Semeias ar priñs, hag e vreudeur, daou-hant.

7. Euz a vibien Hebron : Eliel ar priñs, hag e vreudeur, pevar-ugent.

8. Euz a vibien Ozel : Aminadab ar priñs, hag e vreudeur, daouzeg ha kant.
9. Ha David a halvas Sadok hag Abiatar ar veleien, hag al Levited Uriel, hag Asaia, ha Joel, ha Semeias, hag Eliel, hag Aminadab :
10. Hag a lavaras dezo : C’hwi pere a zo priñsed euz a diadou al Levited, en em zantellait gand ho preudeur, ha degasit arh an Aotrou, Doue Izrael, d’al leh a zo bet aozet dezi,
11. Gand aon na zeuje an Aotrou da skei warnom, evel a-gent, o veza na oah ket eno, ha na hoarvezje bremañ an heveleb tra, mar greom eun dra bennag a-eneb al lezenn.
12. Ar veleien hag al Levited en em zantellaas eta, evid dougen arh an Aotrou, Doue Izrael.
13. Ha mibien Levi a lakaas arh Doue war o diskoaz, gand sparlou, er hiz m’en-doa gourhemennet Moizez, hervez ger an Aotrou.
14. David a lavaras ivez da briñsed al Levited lakaad lod euz o breudeur e-touez ar varzed, evid kana, hag evid c’hoari gand telennou, ha gand lirennou, ha gand simbalou, evid ma vije klevet a-bell son euz o levez.
15. Hag i a lakaas Levited evel-se : Hemañ, mab Joel, hag euz e vreudeur, Asai, mab Barac’hias ; hag euz a vibien Merari o breudeur, Etan, mab Kasaia.
16. Ha ganto o breudeur euz an eil reiz, Zakarias, ha Ben, ha Jaziel, ha Semirannot, ha Jahiel, hag Ani, ha Matatias, hag Elifain, ha Masenias, hag Obededom, ha Jehiel, ar borzerien.
17. Hogen ar ganerien Heman, Asaf, hag Etan a zone gand simbalou arem.
18. Ha Zakarias, hag Oziel, ha Semiramot, ha Jabiel, hag Ani, hag Eliab, ha Maasias, ha Banaias a gane kanaouennou kuzet¹³⁰ war telennou.
19. Ha matatias, hag Efilalu, ha Masenias, hag Obededom, ha Jehiel, hag Ozaiu a gane kanaouennou treh war telennou a eiz korddenn.
20. Hogen Kouenias, priñs al Levited, a oa da benn war ar han ; hag eñ eo a gane da genta ; rag gouzieg-braz e oa.
21. Ha Barac’hias, hag Elkana a oa porzerien an arh.
22. Hogen Sebenias, ha Josafat, ha Natanael, hag Amasai, ha Zakarias, ha Banaias, hag Eliezer, ar veleien, a zone gand kornou e-raog arh Doue ; hag Obededom, ha Jehias a oa porzerien an arh.
23. David eta, hag oll henaoued Izrael, ha priñsed ar vrezilidi, a yeas evid degas arh kevredigez an Aotrou gand levez euz a di Obededom.
24. Ha p’en-doe Doue kennerzet al Levited, pere a zouge arh kevredigez an Aotrou, e oe lazet seiz taro ha seiz tourh.
25. Hogen David a oa gwisket gand eur zae lin moan, kerkoulz hag an oll Levited pere a zouge an arh, hag ar ganerien, ha Konenias, priñs ar varzed hag ar ganerien ; ha David a oa gwisket ivez gand eun efod lin.
26. Hag Izrael oll a zegase arh kevredigez an Aotrou, gand eul levez vraz, ha son ar hornou-boud, hag ar bombardou, hag ar simbalou, hag al lirennou, hag an telennou.
27. Ha pa oe deuet arh kevredigez an Aotrou beteg kêr David, Michol, merh Saul, o selloud dre ar prenest, a welas ar roue David pehini a zañse hg a hoarie ; hag hi a zisprizas anezañ en he halon.

¹³⁰ kanaouennou kuzet : ?

XVI. Pennad.

Kanaouenn David.

1. Degas a rejont eta arh Doue, hag e lakajont anezi e-kreiz an tabernakl endoa stegnet David eviti ; Hag e kinnigjont sakrifisou-losk ha sakrifisou a beoh dirg an Aotrou.
2. Ha pa oe kinniget gand David sakrifisou-losk ha sakrifisou a beoh, e vennigas ar bobl e ano an Aotrou.
3. Hag eñ a roas da bep hini anezo, ken gwazed, ken merhed, eun dorz vara, hag eun tamm kig bevin rostet, ha bleud fritet gand eoul.
4. Hag eñ a lakaas dirag arh an Aotrou Levited, evid he servija hag ober peb labour, evid enori ha meuli an Aotrou, Doue Izrael.
5. Asaf ar priñs anezo ; ha Zakarias e eil ; ha goude Jahiel, ha Semiramot, ha Jehiel, ha Matatias, hag Eliab, ha Banaias, hag Obededom : ha Jehiel war an telennou hag al lirennou ; hag Asaf evid seni gand ar simbalou.
6. Ha Banaias ha Jaziel, ar veleien, evid seni gand ar horn-boud dirag arh kevredigez an Aotrou.
7. En deiz-se David a lakaas Asaf da briñs, evid meuli an Aotrou.
8. Meulit an Aotrou, ha galvit e ano ; brudit e oberiou e-kreiz ar poblou.
9. Kanit eñ, ha sonit eñ : ha livirit e oll vurzudou.
10. Meulit e ano santel : r'en em laouennay kalon ar re a glask an Aotrou.
11. Klaskit an Aotrou hag e nerz ; klaskit bepred e zremm.
12. Ho-pezet koun euz ar burzudou en-deus greet, euz e aroueziou hag euz a varnedigeziou e henou,
13. C'hwi, gouenn Izrael, e servijer ; c'hwi, mibien Jakob, dilennet gantañ .
14. Eñ eo an Aotrou, on Doue : e varnedigeziou a zo en douar oll.
15. Ho-pezet koun da viken euz e gevredigez hag euz ar ger en-deus gourhemennet evid mil rumm ;
16. En-deus roet da Abraham : hag en-deus touet da Izaak ;
17. En-deus lakaet da lezenn da Jakob, ha da gevredigez peurbaduz da Izrael,,
18. O lavaroud : Dit e roin douar Kanaan, evid kordenn da zegouez¹³¹ .
19. Edont neuze dibaot, dister, ha diavêzidi eno.
20. Hag i a dremenas euz eur vroad en eur vroad all, euz a eur rouantelez en eur bobl all.
21. Ne lezas hini ebed da heskina anezo : hogen roueed zoken a gastizas en abeg dezo,
22. O lavaroud : Na likit ket ho taouarn war va eoullet, ha na rit ket a zroug d'am frofeded.
23. Kanit an Aotrou, oll zouar : embannit bemdez ar zilvidigez en-deus roet.
24. Embannit e hloar e-kreiz ar broadou, hag e vurzudou e-kreiz an oll poblou.
25. Rag an Aotrou a zo braz ha da veza meulet meurbed ha da veza doujet dreist an oll doueed.
26. Rag oll zoueed ar poblou a zo idolou ; hogen an Aotrou en-deus greet an neñvou.
27. Gloar ha meurdez a zo dirazañ ; nerz ha levez el leh m'ema.
28. Tiadou ar poblou, degasit d'an Aotrou ; degasit d'an Aotrou ar hloar hag

¹³¹ kordenn da zegouez : an herez a zo dit.

an nerz.

29. Roit ar hloar d'an Aotrou ha d'e ano, grit ar sakrifis, ha deuit dirazañ : hag azeulit an Aotrou gand eun doujañs santel.

30. Ra greno an douar oll dirazañ : rag eñ eo en-deus diazezet ha startaet ar bed.

31. R'en em laouennay an neñvou, ha ra drido an douar ; ha ra vezo lavaret e-touez ar broadou : Rena a ra an Aotrou.

32. Ra drouzo ar mor ha kement a zo ennañ : r'en em laouennay ar mêziou ha kement a zo enno.

33. Neuze gwez ar hoajou a gano meuleudiou dirag an Aotrou.

34. Meulit an Aotrou, o veza ma eo mad ; o veza ma eo peurbaduz e drugarez.

35. Ha livirit : Salv ahanom, Doue or Salver ; ha stroll ahanom, hag on tenn euz a greiz ar broadou, evid ma veulim da ano santel, ha ma en em laouennaim gand da ganaouennou.

36. Ra vezo benniget an Aotrou, Doue Izrael, a-vremañ ha da-viken ; ha ra lavaro an oll bobl : Amen ; ha ra gano meuleudiou an Aotrou.

37. David eta a lezas eno dirag arh kevredigez an Aotrou, Asaf hag e vreudeur, evid ma servijfent dirag an arh bemdez ha pep hini d'e dro.

38. Hogen lakaad a reas Obededom hag e vreudeur, eiz ha tri-ugent ; hag Obededom, mab Iditun, hag Hosa a lakaas da borzerien.

39. Lakaad a reas ivez Sadok da veleg, hag e vreudeur da veleien dirag tabernakl an Aotrou, el leh uhel a oa e Gabaon.

40. Evid ma kinnigjent sakrifisou-losk d'an Aotrou, war aoter ar sakrifisou-losk, bepred, diouz ar mintin ha diouz ar pardaez, hervez kement a zo skrivet el lezenn en-deus gourhemennet an Aotrou da Izrael.

41. Goude Sadok e oa Heman, hag Iduun, hag ar re all pere a oa bet dilennet, pep hini diouz ma oa anvet evid meuli an Aotrou, o veza ma eo peurbaduz e drugarez.

42. Heman hag Iduun a zone ivez gand ar horn-boud, hag a hoarie gand ar simbalou, ha gand ar binviou all, evid kana meuleudiou Doue : hogen mibien Iduun a lakaas da borzerien.

43. Hag an oll bobl a zistroas d'e di e-unan ; ha David ivez, evid bennizien¹³² e di.

XVII. Pennad.

David a fell dezañ sevel eun ti d'an Aotrou. E vab eo a dle e zevel.

1. Hogen pa chome David en e di e-unan, e lavaras da Natan ar profed : Setu e choman en eun ti sedr ; hogen arh kevredigez an Aotrou a zo dindan krehin.

2. Ha Natan a lavaras da Zavid : Gra kement a zo en da galon, rag Doue a zo ganez.

3. Hogen en noz-se e teuas ger Doue da Natan, o lavaroud :

4. Kee, ha komz ouz David, va zervijer : Evel-henn e lavar an Aotrou : Ne zavi ket a di evid chom ennañ.

5. Rag n'on ket bet chomet en eun ti, adaleg an amzer e pehini em-eus tennet

¹³² bennizien : benniga.

Izrael euz an Ejipt, beteg-henn ; hogen bepred on eet euz a eun tabernakl da eun tabernakl all, euz a eun telt da eun telt all,

6. Pa chomen e-touez Izrael oll. Ha komzet em-eus-me biskaoz ouz hini euz a varnerien Izrael, da bere em-oa gourhemennet mesa va fobl, ha lavaret em-eus-me dezo : Perag n'hoh-eus-hu ket savet eun ti sedr din ?

7. Bremañ eta e liviri da Zavid, va zervijer : Evel-henn e lavar Aotrou an armeou : Me em-eus da gemeret, pa oas o peuri ar chatal, evid da lakaad da rena war va fobl Izrael.

8. Ha me a zo bet ganez e pe leh bennag ma eh-eus kerzet, ha lazet em-eus da oll enebourien dirazout, hag em-eus greet dit eun ano ker braz hag hini ar re vrasa a zo bet brudet war an douar.

9. Ha roet em-eus eul leh d'am fobl Izrael : startaet e vezo, hag e chomo ennañ, ha ne vezo ket keflusket pelloh : ha mibien ar fallagriez n'o gwaskint mui, evel m'o-deus greet kent.

10. Abaoe an deziou e pere em-eus roet barnerien d'am fobl Izrael, hag em-eus izellaet da oll enebourien. Disklêria a ran eta dit penaoz an Aotrou a dle sevel da di.

11. Ha pa vezo leuniet da zeziou ganez, ha pa vezi eet gand da dadou, me a zavo unan euz da ouenn da-houde, hag eñ a vezo euz da vibien ; ha kretaad a rin e rounatelez.

12. Eñ eo a zavo eun ti din ; ha me a stardo e dron da viken.

13. Me a vezo tad dezañ, hag eñ a vezo mab din ; ha ne dennin ket va zrugarez dioutañ, evel ma em-eus he zennet diouz an hini a zo bet en da raog.

14. Ha me hel lakay em zi hag em rouantelez da viken ; hag e dron a vezo stard-braz da viken.

15. Hervez an oll heriou-ze, hag hervez an oll weledigez-se, e komzas Natan ouz David.

16. Ha pa oe deuet ar roue David, ha pa chome en e zav dirag an Aotrou, e lavaras : Piou on-me, o ! Aotrou Doue, ha petra eo va zi, ma ri kement-se din ?

17. Hogen kement-se a zo bet nebeud a dra dirag da zaoulagad ; rag se eh-eus komzet diwar-benn ti da zervijer beteg en amzer-da-zond : hag eh-eus va lakaet da veza brudet-braz dreist an dud all, Aotrou Doue.

18. Petra a hell c'hoaz da lavaroud David, pa eh-eus evel-se enoret da zervijer, ha ma eh-eus e anavezet ?

19. O ! Aotrou, en abeg d'az servijer, hag hervez da galon eh-eus greet an oll draou braz-se, hag eo bet fellet dit e ve anad an oll vurzudou.

20. O ! Aotrou, n'eus hini all heñvel ouzit : ha n'eus Doue all nemedout, e-touez ar re oll a bere on-eus klevet ano gand on diskouarn.

21. Ha bez' ez eus eun all, heñvel ouz da bobl Izrael, pobl dispar war an douar, etrezeg pehini eo eet Doue evid he dieubi, hag he lakaad da bobl dezañ, hag evid pellaad dre e halloud hag dre an euz, an oll vroadou a-zirag an hini en-doa tennet euz an Ejipt ?

22. Ha te eh-eus lakaet da bobl Izrael da bobl dit da viken ; ha te, Aotrou, a zo deuet da Zoue dezo.

23. Bremañ eta, Aotrou, ra vezo startaet da viken ar ger eh-eus lavaret diwar-benn da zervijer, ha diwar-benn e di ; gra evel ma eh-eus lavaret.

24. Ra chomo da ano, ha ra vezo meulet da viken ; ha ra vezo lavaret : Aotrou an armeou eo Doue Izrael, ha ti David, e zervijer, a zo stard dirazañ.

25. Rag te eo, Aotrou va Doue, eh-eus roet da anaoud d'az servijer penaoz e

savjes eun ti dezañ ; ha dre ze da zervijer en-deus kavet fiziañs evid pedi dirazout.

26. Bremañ eta, Aotrou, te a zo Doue ; ha te eo eh-eus lavaret an traou mad-se d'az servijer.

27. Ha deuet out da vennizien ti da zervijer, evid ma vzo bepred dirazout : rag me her bennigez, o ! Aotrou, e vezo benniget da viken.

XVIII. Pennad.

David a stourm a-eneb e enebourien hag a zo treh dezo.

1. Hogen goude-ze e c'hoarvezas penaoz David a drehas hag a izellaas ar Filistined, hag a gemeras Get hag he bourhiou euz a zaouarn ar Filistined.

2. Treh a reas ivez Moab, hag ar Voabited a zeuas da zervijerien da Zavid, hag a baeas gwiriou dezañ.

3. David en amzer-ze a drehas ivez Adarezer, roue Soba, e bro Hemat, pa gerze evid astenn e rouantelez beteg ster Eufratez.

4. David eta a gemeras dezañ mil karr, ha seiz mil marheg, hag ugent mil den war droad ; hag eñ a drohas nervennou kezeg ar hirri, nemed kant stern a viras evitañ.

5. Hogen Siried Damas a zeuas evid kennerza Adarezer, roue Soba ; ha David a lazas daou vil den warn-ugent anezo.

6. Lakaad a reas ivez soudarded e Damas, evid ma teuje ar Siria dindan e halloud ha ma paeje gwiriou dezañ. Hag an Aotrou a skoazellas anezañ e kement leh ha ma'z eas.

7. David a gemeras ivez an troñson¹³³ aour o-doa servijerien Adarezer, hg o hasas da Jeruzalem.

8. Degas a reas ivez euz a Debat hag euz a Hun, kêriou a oa da Adarezer, eul lod braz a arem, gand pehini e reas Salomon ar vur arem, hag ar peuliu, ha listri arem.

9. Pa glevas Tou, roue Hemat, penaoz en-doa David trehet oll arme Adarezer, roue Soba,

10. E kasas Adoram, e vab, etrezeg ar roue David, evid goulenn ar peoh digantañ, hag evid diskoueza e levenez dezañ, o veza m'en-doa kannet ha trehet Adarezer ; Tou a oa enebour da Adarezer.

11. Hogen ar roue David a ouestlas d'an Aotrou an oll listri aour, hag arhant, hag arem, gand an arhant hag an aour en-doa kemeret war an oll boblou, ken war an Idumeed, hag ar Voabited, ha mibien Ammon, ken war ar Filistined hag an Amalekited.

12. Abisai, mab Sarvia, a drehas ivez triweh mil Idumead e traonienn an Holen.

13. Hag eñ a lakaas eur gward e Edom, evid lakaad an Idumea dindan galloud David ; hag an Aotrou a ziwallas David e kement leh ha ma'z eas.

14. David eta a renas war Izrael oll, hag eñ a varnas gand reiz e oll bobl.

15. Joab, mab Sarvia, a oa e penn an arme, ha Josafat, mab Ahilud, a oa mirer ar siellou.

16. Ha Sadok, mab Akitob, hag Akimelet, mab Abiatar, a oa beleien-vraz ; ha

¹³³ troñson : ar skoejou.

Susa a oa ar skrivagner.

17. Banaias, mab Joiada, a oa e penn ar Seretied hag ar Feletied ; hogen mibien David a oa ar re genta e-kichen ar roue.

XIX. Pennad.

Hanon, roue an Ammonited, a ra dismegañs da gannaded David.

1. Hogen c'hoarvezoud a reas penaoz Naas, roue mibien Ammon, a varvas ; hag e vab a renas en e leh.

2. Ha David a lavaras : Me a ray trugarez e-keñver Hanon, mab Naas : rag e dad en-deus greet trugarez em heñver. David eta a gasas kannaded evid dizoania anezañ diwar-benn maro e dad. Hogen pa oe deuet ar re-mañ e bro mibien Ammon evid dizoania Hanon,

3. Priñsed mibien Ammon a lavaras da Hanon : Te a gred marteze penaoz eo evid enori da dad hag evid da zizoania en-deus David kaset tud etrezeg ennout ; ha ne welez ket penaoz n'eo deuet e zervijerien nemed evid spia da vro, selloud piz outi, hag he anaoud ervad ?

4. Hanon eta a douzas penn ha baro servijerien David, hag a drohas o zaeou adaleg o reor beteg an treid, hag o hasas kuit.

5. Pa oe eet ar re-mañ kuit, ha p'o-doe roet da anaoud kement-se da Zavid, e kasas eñ d'o diambrouga (rag eun dismegañs vraz a oa c'hoarvezet ganto) ; hag eñ a hourhemennas dezo chom e Jeriko, ken na vije kresket o baro, ha distrei goudeze.

6. Hogen mibien Ammon, ken Hanon, ken an oll bobl, o weloud penaoz o-doa greet dismegañs da Zavid, a gasas mil talant arhant, evid degas kirri ha marheien euz ar Mezopotamia, euz ar Siria-Mac'ha, hag euz a Zoba.

7. Hag a zegasas ganto daou vil karr ha tregont, ha roue Manac'ha gand e bobl. Pa oe deuet ar re-mañ, e stegnjont o hamp dirag Medaba. Mibien Ammon o veza ivez en em zastumet euz o hêriou, a zeuas d'ar brezel.

8. Pa glevas David kement-se, e kasas Joab gand e wella brezelidi.

9. Ha mibien Ammon o veza deuet er-mêz, a reizas o arme e-tal dor kêr ; hag ar roueed a oa deuet d'e skoazia en em lakaas en eil tu er mêziou.

10. Joab eta o weloud penaoz e oa dare da veza taget a-raog hag a-dreñv, a reas eun dibab e-touez ar re galoneka euz a Izrael oll, hag e kerzas a-eneb ar Siried.

11. Ar re all euz ar bobl a oe lakaet dindan galloud Abisai e vreur ; hag i a gerzas a-eneb mibien Ammon.

12. Hag eñ a lavaras : Mar bez ar Siried treh din, e kennerzi ahanon ; hogen mar bez treh mibien Ammon dit, me a gennerzo ahanout.

13. Kaloneka, ha stourmom stard evid or pobl hag evid kêriou on Doue ; hag an Aotrou a ray ar pez a zo mad dirazañ.

14. Joab eta, hag an oll a oa gantañ, a stourmas a-eneb ar Siried, hag o lakaas da dehi.

15. Hogen pa welas mibien Ammon penaoz e oa tehet ar Siried, e tejont ivez dirag Abisai e vreur, hag ez ejont e-barz ar gêr ; ha Joab a zistroas ivez da Jeruzalem.

16. Pa welas ar Siried penaoz e oant bet trehet dirag Izrael, e kasjont kannaded evid degas ar Siried a oa en tu all d'ar ster : Sofac'h, priñs arme Adarezer, a oa e

penn dezo.

17. Pa glevas David kement-se, e strollas oll arme Izrael, e treuzas ar Jourdan, en em daolas warnezo, hag e reizas e arme en o eneb, e-pad ma stourment kaer.

18. Hogen ar Siried a dehas dirag Izrael : ha David a drehas seiz mil den war kirri, ha daou-ugent mil war droad, gand Sofac'h, priñs an arme.

19. Pa welas servijerien Adarezer penaoz e oant bet trehet gand Izrael, en em lakajont a-du gand David, hag e servijont anezañ ; hag a-neuze ar Siried ne rojont mui a skoazell da vibien Ammon.

XX. Pennad.

David a gastiz an Ammonited, hag a dreh ar Filistined.

1. Hogen a-benn eur bloaz, en amzer ma eo boazet ar roueed mond d'ar brezel, Joab a strollas eun arme euz ar re galoneka euz ar vrezilidi ; hag eñ a wastas bro mibien Ammon ; eñ a gerzas hg a hronnas Rabba. Hogen David a chomas e Jeruzalem, e-pad ma stourme Joab ouz Rabba ; hag eñ a gemeras anezi.

2. Neuze David a gemeras kurunenn Melc'hom diwar e benn, hag e kavas enni ar pouez euz a eun talant aour, ha mein talvouduz-braz, hag e reas ganti eun taled-roue evitañ : kalz a breiz a gemeras c'hoaz er gêr-ze.

3. Kas a reas er-mêz an dud a oa enni ; hag e lakaas da dremenoud warnezo tranellou, ha kirri gand begou ha laonennou houarn, evid o dispenna hag o frika : evel-se e reas David da oll gêriou mibien Ammon ; hag e tistroas gand an oll bobl da Jeruzalem.

4. Goude-ze e savas brezel e Gazer a-eneb ar Filistined ; eno eo e lasas Soboc'hai an Husatiad, Safai euz a ouenn al langouineged, hag eñ a vezekaas anezo.

5. Eur brezel all a oe greet a-eneb ar Filistined, e pehini Elehanan, mab Jair euz a Vetlehem, a lasas eur breur da Haliat euz a Hat, pehini en-doa eur fust-goaf evel karvan ar wiaderien.

6. Eur brezel all a hoarvezas e Get, e pehini en em gavas eun den braz direiz, pehini en-doa c'hweh biz, da lavaroud eo, pevar warn-ugent en oll. Hemañ qa oa ivez ganet euz a ouenn al langouineged.

7. Hemañ a gunuhe Izrael ; ha Jonatan, mab Samaa, breur David, a lasas anezañ. Ar re-ze eo mibien al langouineged e Get, pere a gouezas dindan dorn David, ha dindan dorn e zervijerien.

XXI. Pennad.

David a laka da niveri ar bobl. Doue a gas dezañ ar vosenn.

1. Hogen Satan a zavas a-eneb Izrael, hag eñ a zougas David da niveri Izrael.

2. Ha David a lavaras da Joab ha da briñsed ar bobl : It, ha niverit Izrael adaleg Bersabe beteg Dan ; ha degasit din an niver anezañ, evid ma e anavezin.

3. Ha Joab a lavaras : Ra gresko an Aotrou e bobl kant gwech kement ha ma'z eo ; ha n'int ket oll da zervijerien, o ! aotrou va roue ? Perag e klask va

aotrou kement-se, hag a vezo tamallet da behed da Izrael ?

4. Hogen lavar ar roue a oe treh ha Joab a yeas kuit, hag a reas an dro euz a Izrael ; hag a zistroas da Jeruzalem.

5. Hag eñ a roas da Zavid an niver euz ar re en-doa gwelet en e dro ; hag e oe kavet e oll Izrael unneg kant mil den hag a zouge kleze ; hag e Juda pevar-hant mil deg mil ha tri-ugent den a vrezel.

6. Hogen ne niveras ket Levi ha Benjamin ; rag Joab a ree gand erez gourhemenn ar roue.

7. Ar gourhemenn-ze a zisplijas da Zoue ; hag eñ a skoas war Izrael.

8. Ha David a lavaras da Zoue : Gwall-behet em-eus, oh ober kement-se. Distaol, me az ped, ar fallagriez-se d'az servijer, o veza ma em-eus he greet gand diboell.

9. Hag an Aotrou a gomzas ouz Gad, gweler David, o lavaroud :

10. Kee, ha komz ouz David, ha lavar dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou : Tri zra a roan dit da zilenna ; dilenn an hini a giri, ha me e roy dit.

11. Ha pa oe deuet Gad da gavoud David, e lavaras dezañ : Evel-henn e lavar an Aotrou : Dilenn ar pez a giri :

12. Pe tri bloaz naonegez ; pe tri miz o tehoud e-raog da enebourien, heb ma helli pellaad diouz o hleze ; pe tri devez dindan kleze an Aotrou, ha dindan ar vosenn a gouezo war da vro, dindan êl an Aotrou pehini a gaso ar maro dre oll harzou Izrael ; hogen bremañ gwel petra a respontin d'an hini en-deus va degaset.

13. Ha David a lavaras da Had : A bep tu on gwasket gand an anken ; hogen gwell eo ganen koueza etre daouarn an Aotrou, o veza ma eo braz e vadelez, eged koueza etre daouarn an dud.

14. An Aotrou a gasas eta ar vosenn war Izrael ; hag e varvas euz a Izrael deg mil den ha tri-ugent mil.

15. Kas a reas ivez eun êl da Jeruzalem evid he gwasta ; ha pa oe gwastet gantañ, e sellas an Aotrou, hag en-doe truez ouz eun droug ker braz ; hag e lavaras d'an êl a waste : A-walh eo, dalh da zorn. Hogen êl an Aotrou a oa deuet beteg leur Ornan ar Jebusead.

16. Ha David o sevel e zaoulagad, a welas êl an Aotrou pehini a oa en e zav etre an neñv hag an douar, ha gantañ eur hleze noaz en e zorn, ha troet ouz Jeruzalem. Ha David hag an henaoured gwasket gand saeou reun, en em daolas d'an douar war o genou.

17. Ha David a lavaras da Zoue : Ha n'eo ket me eo em-eus lavaret niveri ar bobl ? Me eo em-eus pehet ; me eo em-eus greet an droug ; hogen an deñved-mañ, petra o-deus-i dellezet ? Aotrou, va Doue, tro da zorn, me az ped, warnon ha war ti va zad ; hogen na sko ket war da bobl.

18. Neuze êl an Aotrou a hourhemennas da Had ma lavarje da Zavid pigna ha sevel eun aoter d'an Aotrou Doue e leur Ornan ar Jebusead.

19. David eta a bignas di, hervez lavar Gad, pehini en-doa komzet outañ e ano an Aotrou.

20. Hogen Ornan, hag e bevar mab a oa gantañ, o veza savet o daoulagad, hag o veza gwelet an êl ganto, en em guzas ; rag er pred-se edont o torna ar gwiniz.

21. Pa'z ee eta David etrezeg Ornan, Ornan her gwelas, hag o veza eet er-mêz euz e leur evid e ziambrouga, en em daolas d'an douar war e henou dirazañ.

22. Ha David a lavaras dezañ : Ro din leh da leur, ma savin ennañ eun aoter d'an Aotrou ; en heveleb doare ma roin dit ar pez a dalv, ha ma'h ehano ar goul diwar va fobl.

23. Hag Ornan a lavaras da Zavid : Kemer, ha gret an aotrou, va roue, evel ma karo ; ha me a ro an ejanned evid ar sakrifis-losk, an tranellou evid ar heuneud, hag ar gwiniz evid ar boued-kinnig ; kement-se a roin a galon vad.

24. Hag ar roue David a lavaras dezañ : Ne vezo ket greet evel-se ; hogen me a roy dit ar pezh a dalv ; rag ne dlean ket tenna diouzit ar pezh a ginnigfen d'an Aotrou e sakrifis-losk goude ma ve bet roet din.

25. David a roas eta da Ornan evid al leh c'hweh-kant sikl aour pouez mad.

26. Hag eno e savas eun aoter d'an Aotrou, hag e kinnigas sakrifisou-losk hag ostivou a beoh, hag e halvas an Aotrou, pehini a zelaouas anezañ hag a gasas tan euz an neñv war aoter ar sakrifis-losk.

27. Hag an Aotrou a hourhemennas d'an êl ; hag hemañ a lakaas e gleze en e houin.

28. Raktal eta David, o weloud penaoz en-doa an Aotrou selaouet anezañ e leur Ornan ar Jebusead, a lazas eno viktimou.

29. Hogen tabernakl an Aotrou, an hini en-doa greet Moizez en distro, hag aoter ar sakrifisou-losk, a oa en amzer-ze e leh uhel Gabaon.

30. Ha David ne hellas ket mond beteg an aoter, evid pedi Doue eno ; rag gwall-spontet e oa bet o weloud kleze êl an Aotrou.

XXII. Pennad.

David a aoz pep tra evid sevel templ an Aotrou.

1. Ha David a lavaras : Hemañ eo ti Doue, hag hemañ eo aoter sakrifisou Izrael.
2. Hag eñ a hourhemennas strolla an oll ziavezidi a oa e douar Izrael ; hag e kemeras lod anezo evid bena ha kompeza mein da zevel ti Doue.
3. David a aozas ivez kalz a dachou houarn evid an doriou, hag evid ar frammou all ; hag eul lod diniver a arem.
4. Tud Sidon ha Tir a gasas ivez da Zavid kalz a goad sedr.
5. Ha David a lavaras : Salomon, va mab, a zo c'hoaz eur bugel yaouank ha gwan ; hag an ti a fell din a ve savet d'an Aotrou, a dle beza ker kaer, ma vezo greet meneg anezañ en oll vroioù : me a aozo eta kement ha ma vezo red. Ha dre ze eh aozas a-barz e varo kement ha ma oa red.
6. Hag eñ a halvas Salomon e vab, hag a hourhemennas dezañ sevel eun ti d'an Aotrou, Doue Izrael.
7. Ha David a lavaras c'hoaz da Zalomon : Va mab, va youl a oa sevel eun ti e ano an Aotrou, va Doue.
8. Hogen ger an Aotrou en-deus komzet ouzin, o lavaroud : Kalz a wad eh-eus skuillet, ha kalz a vrezelioù ah-eus greet ; ne helli ket sevel eun ti em ano, pa eh-eus skuillet kemend a wad dirazon.
9. Ar mab a vezo ganet dit a vezo eun den sioul-braz. Ha me hell lakaad da gaoud ehan digand e oll enebourien tro-war-dro ; ha dre ze e vezo anvet den a beoh ; ar peoh hag an ehan a roin e Izrael a-hed e oll zeizioù.
10. Eñ eo a zavo eun ti em ano ; hag eñ a vezo da vab din, ha me a vezo da dad dezañ. Ha me a starday tron e rouantelez war Izrael da viken.
11. Bremañ eta, va mab, ra vezo an Aotrou ganez, ha bez eüruz, ha sav eun ti d'an Aotrou da Zoue, evel ma en-deus e lavaret diwar da benn.
12. Ra roy ivez an Aotrou dit ar furnez hag ar skiant-vad, evid ma helli rena Izrael

- ha miroud lezenn an Aotrou, da Zoue.
13. Rag ne helli ket kerzoud ervad, ma ne virez ket e hourhemennou, hag ar barnadigeziou en-deus an Aotrou kemennet da Voizez da zeski da Izrael. En em greñva ha bez kaloneg ; n'az-pezh ket a aon nag a zaouzan.
 14. Setu-me em paourentez em-eus aozet ar pezh a zo red evid ti an Aotrou ; kant mil talant aour, ha mil war vil¹³⁴ talant arhant ; hag eul lod arem hag houarn dibouez ha diniver ; koad ha mein em-eus aozet evid kement a zo red.
 15. Bez' eh-eus ivez oberourien, mengleuzierien, ha mañsonerien, ha kilvizien, hag a beb oberour mad.
 16. En aour, hag en arhant, hag en arem hag en houarn, heb ma heller o niveri. Sao eta, ha labour, hag an Aotrou a vezo ganez.
 17. David a hourhemennas ivez da oll briñsed Izrael skoazella Salomon, e vab.
 18. Gweloud a rit, emezañ, penaoz ema an Aotrou ho Toue ganeoh, penaoz en-deus roet ar peoh deoh war ho tro ; penaoz en-deus lakaet hoh enebourien etre ho taouarn ; ha penaoz eo lakaet an douar dindan galloud an Aotrou, ha dindan galloud e bobl.
 19. Aozit eta ho kalonou hag hoh eneou evid klask an Aotrou, ho Toue. Savit oll, ha grit eur santuar d'an Aotrou Doue, evid ma vezo kaset arh kevredigez an Aotrou, hag al listri gouestlet dezañ, en ti a dleer da zevel e ano an Aotrou.

XXIII. Pennad.

David a reiz kargou al Levited.

1. Pa oe deuet David da veza koz ha leun a zeiziou, e lakaas Salomon, e vab, da roue war Izrael.
2. Hag eñ a strollas oll briñsed Izrael, hag ar veleien hag al Levited.
3. Hag al Levited a oe niveret adaleg tregont vloaz hag ouspenn ; hag e oe kavet eiz mil den ha tregont mil.
4. Euz ar re-ze e eo dilennet pevar mil warn-ugent etre pere e oe rannet kargou ti an Aotrou ; hag euz ar vererien hag euz ar varnerien, c'hweh mil.
5. Ha pevar mil porzier, ha kemend all a ganerien pere a veule an Aotrou war ar binviou en-doa greet David evid e veuli.
6. Ha David o rannas oll e-touez bugale Levi, da lavaroud eo Gerson, ha Kaat, ha Merari.
7. Mibien Gerson : Leedan, ha Semei.
8. Mibien Leedan : Jahiel ar henta, ha Zetan, ha Joel, tri.
9. Mibien Semei : Salomit, hag Hosiel, hag Aran, tri ; ar re-mañ eo ar pennou euz a diadou Leedan.
10. Hogen mibien Semei : Lehet, ha Ziza an eil : Jaus ha Baria ; ar re-ze eo pevar mab Semei.
11. Hogen Lehet a oa ar henta, ha Ziza an eil : Jaus ha Baria n'o-doa ket nemeur a vugale ; ha dre ze e oent niveret en eun tiad hag en eun ti hepken.
12. Mibien Kaat : Amram, hag Isaar, hag Hebron, ha Oziel : pevar.
13. Mibien Amram : Aaron ha Moizez ; hogen Aaron a oa rannet, eñ hag e vibien, evid servija e sant ar zent da viken, evid kinniga an ezañs d'an Aotrou

¹³⁴ mil war vil : eur milion.

hervez e lid, hag evid binnisien e ano da viken.

14. Mibien Moizez, an den Doue, a oe ivez niveret e breuriez Levi.

15. Mibien Moizez : Gersom hag Eilezer.

16. Mibien Gersom : Sabuel ar henta.

17. Mibien Eliezer : Rohobia ar henta ; hag Eliezer n'en-doe mab all ebed : hogen Rohobia en-doa kalz a vibien.

18. Mibien Isaar : Salomit ar henta.

19. Mibien Hebron : Jeriau ar henta, Amarias an eil, Jahaziel an trede, Jekmaan ar pevare.

20. Mibien Oziel : Mic'ha ar henta, Jesia an eil.

21. Mibien Merari : Moholi, ha Musi. Mibien Moholi : Eleazar ha Kis.

22. Hogen Eilazar a varvas, ha n'en-doa ket a vibien, hogen merhed hepken ; ha mibien Kis, o hendirvi, a zimezas ganto.

23. Mibien Musi : Moholi, hag Eder, ha Jerimot, tri.

24. Ar re-ze eo mibien Levi hervez o herentiezou hag o ziadou, priñsed d'o zro, gand lod euz a dud all, pere a ree servij ti an Aotrou, adaleg ugent vloaz pe ouspenn.

25. Rag David a lavaras : An Aotrou, Doue Izrael, en-deus roet ar peoh d'e bobl, hag he lakaet da chom e Jeruzalem da viken.

26. Ne vezo mui red d'al Levited dougen an tabernakl hag an oll listri evid e zervij.

27. Hervez diweza gourhemennou David, e vezo niveret mibien Levi, adaleg ugent vloaz hag ouspenn.

28. Haqg i a vezo dindan dorn mibien Aaron evid servij ti an Aotrou, er porchedou, hag er hambrou, hag e leh ar glanerez, hag er santuar, hag e oll gargou templ an Aotrou.

29. Hogen ar veleien a vezo karget euz ar baraou kinnig, euz a sakrifis ar bleud, euz ar houignou dihoell, euz ar fritadennou, euz ar rostou, euz an oll boueziou hag euz an oll feuriou.

30. Al Levited en em gavo ivez eno diouz ar mintin evid kana meuleudiou an Aotrou, hag ivez diouz ar pardaez.

31. Ken ar sakrifisou a ginniger d'an Aotrou, ken e deiziou ar sabbat, en deiziou kenta euz ar miz hag er gouelioù all, hervez an niver, hag al lidou euz a bep tra, ha bepred dirag an Aotrou.

32. Hag i a viro lezennou tabernakl ar gevredigez ha lid ar santuar, ha lezennou mibien Aaron o breudeur, evid servija e ti an Aotrou.

XXIV. Pennad.

Reiz ha kargou ar veleien.

1. Hogen setua amañ rannou mibien Aaron : *(Da heul eur bern anoiou).*

XXV. Pennad.

Kanerien ha barzed.

1. David eta ha priñsed an arme a strollas en o hargou mibien Asaf, hag Heman, hag Iditum, evid ma c'hoarijant gand an telennou, gand ar salterionou¹³⁵, ha gand ar simbalou, pep hini oh ober e garg hervez e niver.
(*Da heul eur bern anoïou*).

XXVI. Pennad.

Kargou porzerien an templ.

1 Evel-henn e oe lodennet ar borzerien :
(*Da heul eur bern anoïou*).

XXVII. Pennad.

Daouzeg priñs ti David.

1. Hogen an niver euz a vibien Izrael, pere a oa d'o zro e servij ar roue, hag a oa nevezet beb miz, a oa euz a bevar mil warn-ugent peb gwech, gand priñsed an tiadou, ar vilinerien, ar gantenerien, hag ar brefeded.
2. Jesboam
(*Da heul eur bern anoïou*).

XXVIII. Pennad.

Kelennou a ro David da Zalomon evid sevel an templ.

1. David eta a strollas oll briñsed Izrael, duged ar breuriezou, ha renerien ar bandennou, pere a oa e servij ar roue ; hag ivez ar vilenerien hag ar gantenerien, hag ar re oll a vere madou ar roue, hag e vibien, hag e spazeien, hag ar re halloudeka hag ar re galoneka euz an arme, e Jeruzalem.
2. Hag ar roue o chom en e zav, a lavaras dezo : Selaouit ahanon, va breudeur, ha va fobl : An dezo em-oa bet da zevel eun ti evid lakaad ennañ arh kevredigez an Aotrou, ha skabell treid on Doue ; hag aozet eo bet ganen kement a zo red evid e zevel :
3. Hogen Doue en-deus lavaret din : Ne zavi ket eun ti em ano, o veza ma out eun den a vrezel, ha ma eh-eus skuillet gwad.
4. Hogen an Aotrou, Doue Izrael, en-deus va dibabet e oll di va zad, evid va lakaad da roue war Izrael da viken : rag euz a Juda en-deus dilennet ho priñsed, hag euz a di Juda, ti va zad ; hag e-touez mibien va zad, en-deus kavet mad va dibaba da roue war Izrael oll.
5. Hag e-touez va mibien (rag an Aotrou en-deus roet kalz mibien din), en-deus dibabet Salomon, va mab, evid e lakaad da azeza war tron rouantelez an

¹³⁵ salterionou : ? . Marteze "Iudou"

Aotrou war Izrael.

6. Hag eñ en-deus lavaret din : Salomon da vab a zavo va zi, ha leuriou e zor-dal ; rag e zilennet em-eus evid va mab, ha me a vezo da dad dezañ.

7. Ha me a stardo e rouantelez da viken, mar kendalh da zeveni va helennou, ha va barnedigeziou, evel ma ra bremañ.

8. Bremañ eta dirag oll strollad Izrael, ha dirag on Doue pehini a zelaou ahanom, enklaskit, ha mirit oll hourhemennou an Aotrou, on Doue ; evid ma hopezo an douar mad-mañ, ha ma e lezot da viken d'ho mibien ho-koude.

9. Ha te, Salomon va mab, anavez Doue da dad, ha servij anezañ gand eur galon vad, hag eur youl stard : rag an Aotrou a furch en oll galonou, hag a anavez oll vennoziou ar spered. Ma her hlaskez, her havi ; hogen ma hen dilezez, e tistaolo ahanout da viken.

10. Bremañ eta pa en-deus an Aotrou da zilennet evid sevel ti e zantuar, en em greñva, ha gra hen.

11. Hogen David e-doa roet da Zalomon e vab al linennerez euz ar porched, euz an templ, hag euz a gambrou an arrebeuri, hag euz a gambrou debri, hag euz a gambrou kousk en disgwel, hag euz a di an drugarez ;

12. Hag ivez euz an oll leuriou a felle dezañ ober, hag euz al lojou tro-war-dro, evid teñzoriou ti an Aotrou, ha teñzoriou an traou sakr ;

13. Hag ivez euz al lodennerez euz ar veleien hag euz al Levited a oa e servij ti an Aotrou, hag euz an oll listri a oa red evid servij templ an Aotrou :

14. Hag euz ar pouez a dlee da gaoud an oll listri aour, hag an oll listri arhant diouz o zervij.

15. Rei a reas ivez an aour a oa red evid ar hantolériou aour hag o hleuzeuriou, hag an arhant a oa red evid ar hantolériou arhant hag o hleuzeuriou.

16. Rei a reas c'hoaz an aour a oa red evid an taoliou a vara-kinnig hervez o ment, hag ivez an arhant evid taoliou all arhant.

17. Rei a reas ivez evid ober ar ferierigou¹³⁶, hag ar hopou, hag an ezañsoueriou euz an aour ar glanna, hag al leonedigou aour, hervez ar vent euz a beb leonig : rei a reas ivez arhant evid al leonedigou arhant, hervez ar pouez anezo.

18. Rei a reas aour ar glanna evid an aoter war pehini e teved an ezañs ; hag evid ar jerubined a oa evel eur harr, a astenne o diouaskell hag a holoe arh kevredigez an Aotrou.

19. Kement-se, eme David, a zo deuet din skrivet gand dorn an Aotrou, evid ma anavezjen an oll labour hervez ar skwer.

20. David a lavaras c'hoaz da Zalomon, e vab : Kaloneka, hag en em greñva, ha labour : n'az-pezh ket a aon, ha na spont ket : rag an Aotrou va Doue a vezo ganez, ha n'az tistaolo ket, ken n'az-pezo peurhreet oll labour servij ti an Aotrou.

21. Setu bandennou ar veleien hag al Levited a vezo ganez evid oll zervij ti an Aotrou, hag i a zo dare, ha kerkoulz ar briñsed hag ar bobl a zo reizet evid ober da oll hourhemennou.

XXIX. Pennad.

¹³⁶ ferierigou : ? . maretze “fourcheteziou“

David a veul an Aotrou, hag a bed evid e bobl hag evid e vab.

1. Neuze ar roue David a lavaras d'an oll strollad : Va mab Salomon hepken en-deus bet dibabet gand Doue¹³⁷, hag eñ yaouank ha tener ; rag braz eo al labour, pa eo gwir penaoz n'eo ket evid eun den, hogen evid Doue, e saver eun ti.

2. Evidon-me em-eus aozet, e kement ha ma hellen, mizou ti va Doue : aour evid al listri aour, hag arhant evid ar re arhant ; arem evid ar re arem, houarn evid ar re houarn, koad evid ar re goad : mein oniks, mein gwenn, hag euz a beb liou, mein talvouduz-braz, ha kalz a varbr euz a Baros.

3. Ouspenn kement-se em-eus kinniget evid ti va Doue, em-eus ivez roet euz va madou va-unan, aour hag arhant evid templ va Doue, heb niveri ar pez em-eus aozet evid ti ar santuar.

4. Tri mil talant aour euz a aour Ofir, ha seiz mil talant arhant ar glanna, evid alaouri mogerious an templ.

5. Evid e peleh bennag ma vezo red, ma ray al labourerien gand aour al labourious aour, ha gand arhant al labourious arhant. Ha mar fell da eur re kinniga eun dra anezañ e-unan, ra leunio hirio e zorn, ha ra ginnigo d'an Aotrou ar pez a garo.

6. Priñsed an tiadou, ha pennou breuriezou Izrael, hag ar vilenerien, hag ar gantenerien, ha priñsed madou ar roue a reas eta o gouestl.

7. Hag i a roas evid labourious ti Doue pemp mil talant aour, ha deg mil solid¹³⁸, ha deg mil talant arhant, ha triweh mil talant arem, ha kant mil talant houarn.

8. Ha kement hini en-doa en e di mein talvouduz, o roas evid o lakaad e teñzor ti an Aotrou, dre zorn Jahiel, ar Gersonit.

9. Hag ar bobl en em laouennaas o ouestla kement-se anezo o-unan ; rag a galon vad o hinnigent d'an Aotrou ; hogen ar roue David en em laouennaes gand eul levenez vraz.

10. Hag eñ a vennigas an Aotrou dirag an oll bobl-se, hag a lavaras : Benniget out, Aotrou, Doue Izrael, on tad a-viken da viken.

11. Dit, Aotrou, eo ar veurdez, hag ar galloud, hag ar hloar, hag an treh ; ha dit eo ar veuleudi : rag kement a zo en neñv hag en douar a zo dit : ar rouantelez a zo dit, ha te a zo dreist an oll briñsed.

12. Ar madou hag ar hloar a zo dit : te a zo Aotrou war an oll : an nerz hag ar galloud a zo en da zorn ; ar veurdez hag ar galloud a zo ivez en da zorn.

13. Bremañ eta eh anavezom ahanout evid on Doue, hag e veulom da ano braz-meurbed.

14. Hogen piou on-me, ha piou eo va fobl, evid ma hellfem kinniga dit an oll draou-ze ? Kement tra a zo dit ; ha roet on-eus dit ar pez a oa deuet deom digand da zorn.

15. Rag tremenidi ha diavêzidi om dirazout, evel on oll dadou. On deizioù a zo evel eur skeud ar an douar, ha n'eus dale ebed.

16. Aotrou, on Doue, an oll vadou-ze on-eus dastumet evid sevel eun ti d'az ano santel, a zo deuet digand da zorn, ha kement tra a zo dit.

17. Me a oar, o ! va Doue, penaoz e furchez ar halonou ha penaoz e karez an eeunder : rag se em-eus kinniget kement-se dit e eeunder va halon ha gand

¹³⁷ hepken en-deus bet dibabet gand Doue a zo bet dibabet...

¹³⁸ solid : arhant bro-Bersia.

levenez ; ha gwelet em-eus gand eul levenez vraz ar bobl a zo bet kavet amañ, o kinniga dit he roou a galon.

18. Aotrou, Doue Abraham, hag Izaak, hag Izrael, on tadou, mir da viken ar youl-ze en o halon, ha ra gendalhint bepred en dezo da veza doujuz en da geñver.

19. Ro ivez da Zalomon, va mab, eur galon dinamm, evid ma viro da hourhemennou, ha da desteniou, ha da lidou, ha m'o seveno oll : ha ma savo an ti, evid pehini em-eus aozet kement a zo red.

20. Ha David a lavaras neuze d'ar strollad oll : Bennigit an Aotrou, on Doue, Hag ar strollad oll a vennigas an Aotrou, Doue o zadou ; hag i a stouas, hag a azeulas Doue, ha goude ar roue.

21. Hag i a lazas viktimou d'an Aotrou : hag antronoz e kinnigjont e sakrifis-losk mil taro, mil tourh, mil oan, gand o braoued kinnigou, hag an oll lidou a oa red evid Izrael oll.

22. Hag i a zebras hag a evas en deiz-se dirag an Aotrou gand eul levenez vraz. Hag eh eouljont evid an eil gwech Slomon, mab David. E eoulia a rejont da roue dirag an Aotrou, ha Sadok da veleg-braz.

23. `Salomon eta a azezas war tron an Aotrou e leh e dad, hag eñ a blijas dezo oll ; hag Izrael oll en em lakaas dindan e halloud.

24. An oll briñsed, hag ar re vraz, hag oll vibien ar roue David zoken, a roas o dorn dezañ, hag en em lakaas dindan galloud ar roue Salomon.

25. An Aotrou a zavas eta Salomon war Izrael oll ; hag eñ a roas d'e ren eur hloar ne oa ket bet he far en e raog gand hini euz a roueed Izrael.

26. David eta, mab Isai, a renas war Izrael oll.

27. Hag an deziou e-pad pere e renas war Izrael a oe euz a zaou-ugent vloaz : seiz vloaz e renas e Hebron, ha tri bloaz ha tregont e Jeruzalem.

28. Hag eñ a varvas en eur gozni vad, leun a zeziou, a vadou hag a hloar ; ha Salomon, e vab a renas en e leh.

29. Hogen oberiou ar roue David, ken ar re genta, ken ar re ziweza, a zo skrivet e levr Samuel, ar gweler, hag e levr Natan , ar profed, hag e levr Gad, ar gweler ;

30. Gand e oll ren, hag e halloud, hag an amzeriou a zo tremenet dindanañ, daoust pe e Izrael, daoust pe en oll rouanteleziou all euz an douar

AR PARALIPOMENON

EIL LEVR

I. Pennad.

An Aotrou a ra ar furnez da Zalomon

1. Salomon, mab David, en em greñvaas eta en e rouantelez : hag an Aotrou, e Zoue, a oa ganatñ, hag a zavas anezañ uhel-meurbed.
2. Ha Salomon a hourhemennas da Izrael oll, d'ar vilinerien, ha d'ar gantenerien, ha d'an ofiserien, ha da varnerien Izrael oll, ha da briñsed an tiadou,
3. Hag eñ a yeas gand an oll strollad tud-se war al leh uhel euz a Habaon, e peleh edo tabernakl kevredigez Doue, a oa bet greet en distro gand Moizez, servijer Doue.
4. Hogen David en-doa degaset arh Doue euz a Gariatiarim, d'al leh en-doa aozet dezi, hag en-doa savet eun tabernakl eviti, da lavaroud eo, e Jeruzalem.
5. An aoter arem a oa bet greet gand Beseleel, mab Uri, mab Hur, a oa eno dirag tabernakl an Aotrou : ha Salomon gand an oll strollad a yeas d'he herhoud.
6. Ha Salomon a bignas ouz an aoter arem, dirag tabernakl kevredigez an Aotrou, hag a ginnigas mil ostiv warnezi.
7. Hogen setu en nozvez-se en em ziskouezas Doue dezañ, hag e lavaras : Goulenn ar pezh a fell dit a rojen dit.
8. Ha Salomon a lavaras da Zoue : Te eh-eus greet eun drugarez vraz e-keñver David va zad, hag eh-eus va lakaet da roue en e leh.
9. Bremañ eta, Aotrou va Doue, bezet sevenet ar ger eh-eus roet da Zavid va zad. Pa eh-eus va lakaet da roue war da bobl vraz pehini a zo ker paot ha poultr an douar,
10. Ro din ar furnez hag ar ouiziegez, evid ma hellin mond e-barz ha mond er-mêz dirag da bobl : rag piou a hellfe barna ervad ar bobl-se dit, a zo ker paot ?
11. Ha Doue a lavaras da Zalomon : O veza ma eo bet kement-se kavet gwell ganez, ha n'eh-eus ket goulennet ar madou, nag an danvez, nag ar hloar, na buhez ar re a gasa ahanout, nag eur vuhez hir ; hogen ma eh-eus goulennet ar furnez hag ar ouiziegez evid galloud barna va fobl, war behini em-eus da lakaet da roue.
12. Ar furnez hag ar ouiziegez a roan dit, hag e roin ivez dit ar madou, hag an danvez, hag ar hloar, en heveleb doare na vezo bet, nag en da raog, na da houde, roue ebed heñvel ouzit.
13. Salomon a zeuas eta euz a leh uhel Gabaon, euz a-zirag tabernakl ar gevredigez da Jeruzalem, hag a renas war Izrael.
14. Hag eñ a zastumas kirri ha marheien, hag eñ en-doa mil pevar-hant karr, ha daouzeg mil marheg ; hag eñ o lakaas e kêriou ar hirri, ha gand ar roue e Jeruzalem.
15. Hag ar roue a lakaas an arhant hag an aour da veza ker stank hag ar vein ; hag ar gwez-sedr ker stank hag ar skao-gwrah a zav dre-oll er hompezennou.
16. Marhadourien ar roue a zegase dezañ kezeg euz an Ejipt, euz a Goa, e peleh ez eent evid o frena.

17. Eun denn a bevar marh a gouste c’hweh-kant pez arhant, hag eur marh kant hag hanter-kant ; hag evel-se o frenent digand oll roueed an Heteed ha roueed ar Siria.

II. Pennad.

Roue Tir a gas micherourien da Zalomon evid sevel an templ.

1. Salomon eta a gemeras an dezo da zevel eun ti e ano an Aotrou, hag eur palez evitañ e-unan.

2. Hag eñ a niveras deg mil den ha tri-ugent mil evid dougen war o diskoaz, ha pevar-ugent mil evid bena ar vein war ar menezioù, ha tri mil c’hweh-kant da evesaad warnezo.

3. Kas a reas ivez eterzeg Hiram, roue Tir, o lavaroud : Evel ma eh-eus greet e-keñver David va zad, o kas dezañ koad sedr evid sevel eun ti dezañ, e pehini eo bet chomet ;

4. Gra evel-se em heñver, evid ma savin eun ti e ano an Aotrou, va Doue, ma ouestlin anezañ evid devi ezañs dirazañ, evid lakaad da vogedi louzou c’hwez-vad, evid lakaad bepred bara-kinnig, hag evid kinniga sakrifisou-losk diouz ar mintin ha d’ar pardaez, ha d’an deizioù sabbat, ha d’al loarioù nevez, hag e gouelioù all an Aotrou, on Doue da-viken, er hiz ma eo bet gourhemennet da Izrael.

5. Rag an ti a fell din da zevel a vezo braz, o veza ma eo braz on Doue dreist an oll Zoueed.

6. Piou eta a vezo galloudeg a-walh evid sevel eun ti kaer a-walh evitañ ? Ma ne hell an neñv, ha neñvou an neñvou e zerhel, piou on-me, evid ma hellfen sevel eun ti dezañ ? Hogen n’eo nemed evid devi ezañs dirazañ.

7. Degas eta din eun den desket, pehini a ouezo laboura en aour, hag en arhant, hag en arem, hag en houarn, hag e limestra, hag e tane, hag e glaz ; hag a ouezo ober kizelladurioù evel ma ra ra vicherourien em-eus e Juda hag e Jeruzalem, hag a zo bet dilennet gand David, va zad.

8. Degas ivez din koad sedr, ha koad sapr, ha koad pin eul¹³⁹ al Liban : rag me a oar penaoz da dud a droh ervad koajou al Liban, ha va zervijerien a vezo gand da re ;

9. Evid ma vezo aozet din kalz a goad ; rag an ti a fell din da zevel a vezo braz ha kaer.

10. D’ar re euz da zervijerien pere a droho hag a laboura ar hoad-se, e roin evid en em voueta ugent mil korus¹⁴⁰ gwiniz, ha kemend-all a heiz, hag ugent mil metret¹⁴¹ gwin, hag ugent mil sat¹⁴² eoul.

11. Hag Hiram, roue Tir, a lavaras da Zalomon dre eul lizer a gasas dezañ : O veza ma en-deus an Aotrou karet e bobl, dre ze en-deus da lakaet da roue warnezañ.

12. Hag eñ a lavaras c’hoaz : Benniget ra vezo an Aotrou, Doue Izrael, pehini en-deus greet an neñv hag an douar, pehini en-deus roet d’ar roue David eur mab

¹³⁹ eul : koad “santal”.

¹⁴⁰ korus : muzul (?)

¹⁴¹ metret : muzul (?)

¹⁴² sat : muzul (?)

fur, ha gouizieg, ha skianteg, ha poelleg, evid sevel eun ti d'an Aotrou, hag eur palez evitañ.

13. Kas a ran eta dit eun den poelleg ha desket-braz, Hiram va zad,

14. Pehini a zo mab da eur wreg euz a verhed Dan, ha da eun tad a zo euz a Dir, pehini a oar laboura en aour, hag en arhant, hag en arem, hag en houarn, hag er marbr, hag er hoad, hag e limestra, hag e mezer glaz, hag e lin moan, hag e tane ; pehini a oar ivez ober kizelladurioù a beb doare, ha kavoud en e benn kement a zo red evid e labour, gand da vicherourien, ha gand micherourien va aotrou, David da dad.

15. Kas eta, va aotrou, d'az servijerien ar gwiniz, an heiz, an eoul hag ar gwin eh-eus lavaret e kASFes.

16. Ha ni a lakay da droha el Liban ar hoad a vezo red evidout, hag a gaso anezañ e radellou dre ar mor da Joppe ; ha te a lakay e gas da Jeruzalem.

17. Salomon a niveras eta an oll dud a-ziavêz a oa e douar Izrael, abaoe an nivererez en-doa greet David e dad, hag e oe kavet kant mil hag hanter-kant mil ha c'hweh-kant.

18. Hag eñ a lakaas deg mil ha tri-ugent mil anezo evid dougen behiou war o diskoaz, ha pevar-ugent mil evid bena mein er menezioù, ha tri mil ha c'hweh-kant evid evesaad ouz labour an dud-se.

III. Pennad.

Salomon a zao ti an Aotrou.

1. Ha Salomon a zeraouas sevel ti an Aotrou e Jeruzalem war menez Moria a oa bet diskouezet da Zavid, e dad, el leh a oa bet aozet gand David, e dad, e leur Ornan ar Jebusead.

2. Hogen dond a reas d'e zevel en eil miz euz ar pevare bloaz euz e ren.

3. Ha setu an diazez a daolas Salomon, evid sevel ti Doue : tri-ugent ilinad a hed, hervez ar vent kenta, hag ugent ilinad a led.

4. Hag ar palier a oa dirag an nor-dal, pehini a oa ken hir ha led an ti, en-doa ugent ilinad ; hag an uhelder anezañ a oa euz a hweh-ugent ilinad ; hag eñ a alaouras an diabarz gand aour ar glanna.

5. Golei a reas ivez ar brasa euz an ti gand taolennou koad sapr, war bere e lakaas penn-da-benn taolennou aour ar glanna ; hag eñ a gizellas warnezo barrou palmez, hag evel chadennoùigou strobet an eil e eben.

6. Paveza a reas ivez an templ gand marbr ar haerra, kinklet-braz.

7. Hogen an aour gand pehini e holoas an ti, hag an treustou, hag ar peulioù, hag ar mogerioù, hag an dorioù, a oa euz ar gwella ; hag eñ a gizellas kerubined war ar mogerioù.

8. Ober a reas ivez ti Sant ar zent ; e hed, hervez led an ti, a oa euz a ugent ilinad, hag e led a oa ivez euz a ugent ilinad ; hag eñ a holoas anezañ gand taolennou aour, a dalve war-dro c'hweh-kant talant.

9. Ober a reas ivez tachou aour, pere a boueze hanter-kant sikl pep hini ; ar hambrou uhel a holoas ivez gand aour.

10. Ober a reas ivez e ti Sant ar zent daou gerubin, gand labour ar gizellerien ; hag eñ o goloas gand aour.

11. Askellou ar gerubined o-doa ugent ilinad a hed, en heveled doare m'he-

doa eun askell pemp ilinad, ha ma'z ee beteg moget an ti, m'he-doa eun askell all pemp ilinad, ha ma'z ee beteg askell ar herubin all.

12. Evel-e askell ar herubin all he-doa pemp ilinad, hag a yee beteg ar voger : m'he-doa eun askell all pemp ilinad, ha ma'z ee beteg beteg askell ar herubin all.

13. Askellou ar gerubined-se a oa eta astennet, hag en em astenne war ugent ilinad ; hogen i a oa en o zav war o zreid, hag o fennou a oa troet war-zu an ti a-ziavêz.

14. Ober a reas ivez eur ouel gand mezer glaz, gand limestra, gand tane, ha gand lin moan ha warnezi e weas kerubined.

15. Daou beul a reas ivez dirag dor an templ, pere o-doa pemp ilinad ha tregont a uhelder ; hag o fennou o-doa pemp ilinad.

16. Ober a reas ivez chadennouigou evel er satuar, hag e lakaas anezo war pennou ar peulioù ; ha kant aval grenad a lakaas war ar chadennouigou.

17. Lakaad a reas ar peulioù-ze e palier an templ, unan a-zehou, hag egile a-gleiz ; an hini a oa a-zehou a halvas Jac'hin, hag an hini a-gleiz, Booz.

IV. Pennad.

Aoter arem, mor teuz, taoliou ha listri an templ.

1. Salomon a reas ivez an aoter arem euz a ugent ilinad a hed, hag euz a ugent ilinad a led, hag euz a zeg ilinad a uhelder.

2. Hag eur mor teuz euz a zeg ilinad euz an eil tu d'egile, hag eñ ront tro-war-dro : pemp ilinad a uhelder en-doa ; hag eur rizenn a dregont ilinad a oa tro-war-dro dezañ.

3. A-iz d'ar rizenn ez oa skeudennou ejenned, ha deg ilinad a gizelladur en diavêz er hiz daou reiz¹⁴³ tro-ar-dro d'ar mor. Hogen an ejenned a oa bet teuzet.

4. Ar mor-ze a oa douget war daouzeg ejenn, a bere tri a zelle ouz an hanternoz, ha tri ouz ar huz-heol, ha tri ouz ar hreisteiz, ha tri ouz ar sav-heol : ar mor a oa douget war an ejenned-se hag ar penn-a-dreñv euz an ejenned en em gave dindan ar mor.

5. An deoder anezañ a oa euz eur raouennad, hag ar vuzell anezañ a oa evel muzell eur hop, pe evel eul lilienn rodellet ; hag eñ a zalhe tri mil metret.

6. Ober a reas deg basin ; hag e lakaas pemp a-zehou ha pemp a-gleiz evid gwalhi enno kement a dlee beza kinniget e sakrifis-losk ; hogen ar veleien en em walhe er mor arem.

7. Ober a reas c'hoaz deg kantoler aour, hervez an doare a oa bet gourhemennet evid o ober ; hag e lakaas anezo en templ, pemp a-zehou ha pemp a-gleiz :

8. Hag ivez deg taol ; hag e lakaas anezo pemp a-zehou ha pemp a-gleiz ; ha c'hoaz kant fiolenn.

9. Ober a reas ivez leurenn ar veleien, hag eun iliz-veur ; ha doriou an iliz-veur a holoas gand arem.

10. Lakaad a reas ar mor en tu dehou, dirag ar sav-heol, war-zu ar hreisteiz.

11. Hiram a reas ivez podou, ha ferierigou, ha fiolennou ; hag eñ beurhreas oll labour ar roue e templ Doue ;

¹⁴³ daou reiz : diou reñk.

12. Da lavaroud eo daou beul, ha kerdinigoù war pennoù ar peulioù, hag e doare rouedouigoù, pere a holoe ae herdinigoù a oa war ar pennoù.`

13. Hag ivez pevar-hant aval-grenad, ha diou rouedig ; en heveleb doare, ma en em gave diou renkad avalou-grenad e peb rouedig, pere a holoe kerdinigoù pep penn peul.

14. Treid a reas ivez, ha basinou a lakaas war an treid :

15. Hag eur mor, ha daouzeg ejenn dindan ar mor.

16. Ha podou, ha fieririgoù, ha fiolennou. Hiram a reas da Zalomon, her hare evel e dad, an oll liziri evid ti an Aotrou, pere a oa euz a arem ar glanna.

17. Ar roue a lakaas o zeuzi en eur gomezenn tost d'ar Jourdan, en eun douar prieg, etre Sokot ha Saredata.

18. Hogen an oll listri-ze a oa diniver, en heveleb doare na anavezad ket ar pouez euz an arem.

19. Evel-se Salomon a reas oll listri ti Doue, hag an aoter aour, hag an taolioù war bere edo ar baraou-kinnig :

20. Hag ar hantolerioù a aour ar glanna, gand o hleuzeurioù evid goulaoui dirag an orakl¹⁴⁴ hervez ar hiz :

21. Hag ivez evel bleun, ha kleuzeurioù, ha gultanioù¹⁴⁵ aour : hag i oll a oa greet gand aour ar glanna.

22. Ha boestou an ezañs, hag an ezañsoueroù, hag ar fiolennou, hag al listri-brev¹⁴⁶, a oa euz a aour ar glanna. Dorioù templ an diabarz, da lavaroud eo Sant ar zent, a oa kizellet ; hag an dorioù a-ziavêz a oa euz a aour. Evel-se e oe peurhreet al labour a reas Salomon evid ti an Aotrou.

V. Pennad.

Degaset eo an arh e templ an Aotrou.

1. Salomon a zegasas eta en templ kement en-doa gouestlet David e dad : lakaad a reas an aour, an arhant, hag an oll listri e teñzorioù ti Doue.

2. Goude-ze e strollas e Jeruzalem henaoured Izrael, hag oll briñsed ar breuriezoù, ha pennoù tiadou mibien Izrael, evid ma tegasjent arh kevredigez an Aotrou euz a gêr David a zo Sion.

3. Oll dud Izrael a zeuas eta etrezeg ar roue en deiz gouel euz ar seizved miz.

4. Ha pa oe deuet oll henaoured Izrael, al Levited a gemeras an arh.

5. Hag a zougas anezi, ha kement a zelle ouz an tabernakl. Hogen ar veleien gand al Levited a zouge listri ar santuar a oa en tabernakl.

6. Ar roue Salomon, hag oll bobl Izrael, hag ar re oll a oa bet strollet dirag an arh, a lazas tourhed hag ejenned heb niver, diouz al lod braz euz ar viktimou.

7. Hag ar veleien a zegasas arh kevredigez an Aotrou en he leh, da lavared eo e orakl¹⁴⁷ an templ, e Sant ar zent, dindan askellou ar gerubined¹⁴⁸ :

8. En heveleb doare ma astenne ar gerubined o diouaskell war al leh e pehini

¹⁴⁴ dirag an orakl : hervez ar pezh a oa bet gourhemennet.

¹⁴⁵ gultanioù : sizailloù evid laza ar goulou war ar hleuzeurioù.

¹⁴⁶ al listri-brev : al listri evid deva.

¹⁴⁷ orakl : e santuar.

¹⁴⁸ gerubined : kerubined. Gwechou 'zo "jerubined".

e oa bet lakaet an arh, ha ma holoent anezi gand he barrou.

9. Hag o veza ma oa hir eun nebeud ar barrou gand pere e touged an arh, e weled ar penn anezo euz a-zirag an orakl ; hogen neb a oa en diavêz ne helle ket o gweloud. Hag an arh a zo bet eno beteg-henn.

10. Ha ne oa netra en arh, nemed an diou daolenn en-doa lakaet Moizez enni e Horeb, pa roas an Aotrou e lezenn da vugale Izrael pa zeuent er-mêz euz an Ejipt.

11. Pa oe deuet ar veleien er-mêz euz ar santuar (rag ar veleien oll pere a hellas en em gavoud eno a oe santellaet : ha ne oe ket bet c'hoaz rannet etrezo en amzer-ze ar hargou hag ar reiz anezo).

12. Ken al Levited, ken ar ganerien, da lavaroud eo ar re a oa dindan Asaf, hag ar re a oa dindan Eman, hag ar re a oa dindan Iditun, hag o mibien, hag o breudeur, gwisket gand lin moan, a hoarie gand simbalou, ha gand lirennou, ha gand telennou, hag i en o zav e sav-heol an aoter, ha ganto c'hweh-ugent beleg pere a zone gand ar horn-boud.

13. O veza eta ma kanent oll a-unan, gand kornou-boud, ha gand moueziou, ha gand simbalou, ha gand ograou, ha gand kalz binviou all, hag o sevel uhel o mouez, eun trouz a oe klevet a-bell ; en heveleb doare, pa en em lakajont da veuli an Aotrou ha da lavaroud : Enorit an Aotrou, rag mad eo, rag peurbaduz en e drugarez ; ti an Aotrou a oe leun gand eur goabrenn ;

14. Hag ar veleien ne hellent ket chom eno, nag ober o harg en abeg d'ar goabrenn ; rag gloar an Aotrou he-doa leuniet ti Doue.

VI. Pennad.

Pedenn Salomon e deiz sakrerez an templ.

1. Neuze Salomon a lavaras : An Aotrou en-deus lavaret e chomje an deñvalijenn.

2. Ha me em-eus savet eun ti d'e ano, evid ma chomo eno da viken.

3. Hag ar roue a droas e zaoulagad, hag a vennigas oll strollad Izrael (rag an oll dud a oa en o zav, hag i war evez) ; hag e lavaras :

4. Benniget ra vezo an Aotrou, Doue Izrael, pehini en-deus greet ar pez en-doa lavaret da Zavid, va zad, o komza vel-henn :

5. Abaoe an deiz e pehini em-eus tennet va fobl euz a zouar an Ejipt, n'em-eus ket dilennet eur gêr e-touez oll vreuriezo Izrael evid ma vije savet enni eun ti d'am ano ; ha n'em-eus ket dilennet eun den all evid beza rener war va fobl a Izrael ;

6. Hogen dilennet em-eus Jeruzalem, evid ma vezo va ano enni ; ha dilennet em-eus David, evid e lakaad war va fobl Izrael.

7. Ha pa fellas da Zavid, va zad, sevel eun ti en ano an Aotrou, Doue Izrael,

8. An Aotrou a lavaras dezañ : Pa eh-eus bet ar youl da zavel eun ti em ano, eh-eus greet mad kaoud ar youl-ze :

9. Koulskoude n'eo ket te a zavo eun ti din, hogen da vad, pehini a zeuy er-mêz euz da zigroazell ; hennez eo a zavo eun ti d'am ano.

10. Greet eo eta gand an Aotrou ar pez en-doa lavaret ; savet on e-leh David, va zad, hag on azezet war tron Izrael, evel ma en-deus lavaret an Aotrou ; hag em-eus savet eun ti en ano an Aotrou, Doue Izrael :

11. Hag em-eus lakaet ennañ an arh, e pehini ema ar gevredigez en-deus greet

an Aotrou gand bugale Izrael.

12. Salomon eta en em lakaas en e zav dirag aoter an Aotrou dirag oll strollad Izrael, hag a astennas e zaouarn.

13. Rag Salomon en-doa greet eun diazez arem, pehini en-doa pemp ilinad a led, ha tri ilinad a uhelled : hag eñ a zavas warnezañ, ha goude-ze o plega e zaoulin dirag oll strollad Izrael, hag o sevel e zaouarn etrezeg an neñv,

14. E lavaras : Aotrou, Doue Izrael, n'eus ket a Zoue heñvel ouzit nag en neñv, na war an douar ; te pehini a vir ar gevredigez hag an drugarez eh-eus greet d'az servijerien, pere a gerz dirazout a-greiz o halon :

15. Te pehini eh-eus greet e-keñver David, va zad, da zervijer, ar pezh ez-poa lavaret dezañ ; gand da henou eh-eus komzet, ha gand da zaouarn eh-eus peurhreet, evel ma ro da wir an deiz-mañ.

16. Bremañ eta, Aotrou, Doue Izrael, gra e-keñver David, va zad, da zervijer, kement ha ma eh-eus lavaret dezañ evel-henn : Ne vezo ket tennet diouzit an hini a dle azeza dirazon war tron Izrael ; gand ma viro koulskoude ar vugale o heñchou, ha ma kerzint em lezenn, vel ma eh-eus kerzet dirazon.

17. Hogen bremañ, Aotrou, Doue Izrael, gra ar pezh eh-eus lavaret da Zavid, da zervijer.

18. Piou a hellfe kredi e chomfe Doue gand an dud war an douar ? Ma ne hell an neñv nag an neñvou da zerhel, gand pegen nebeud a wir her gree an ti-mañ em-eus savet ?

19. Hogen dre gement-mañ eo bet greet hepken, evid ma selli ouz pedenn da zervijer, hag ouz e ouestlou, Aotrou, va Doue ; ha ma selaoui ouz ar pedennou a ray da zervijer dirazout :

20. Evid ma tigori da zaoulagad noz-deiz war an ti-mañ, war al leh e pehini ez-poa lavaret e vije galvet da ano,

21. E selaoufes ouz ar bedenn a ra da zervijer ennañ ; hag e klevjes ouz pedennou da zervijer ha da bobl Izrael. Piou bennag a bedo el leh-mañ, selaou anezañ euz al leh e pehini e chomez, da lavaroud eo, euz an neñvou, ha gra trugarez en e geñver.

22. Ma en-deus pehet eun den a-eneb e nesa, ha mar deu da doui en e eneb, ha d'en em ouestla d'ar valloz dirag da aoter en ti-mañ ;

23. Tde a zelaouo euz an neñv, hag a varno da zervijerien ; disteurel a ri e fallagriez war an hini fallagr, hag e tidamalli an hini reiz, o rei dezañ hervez e reizded.

24. Mar deo trehet da bobl Izrael gand heh enebourien, (rag i a beho en da eneb), hag o tistrei mar greont pinijenn, mar meulont da ano, ha mar pedont el leh-mañ,

25. Te a zelaouo outo euz an neñv, hag a zistaolo he fehed d'ar bobl¹⁴⁹ Izrael, hag a zegaso anezo d'an douar eh-eus roet dezo ha d'o zadou.

26. Mar bez serret an neñv, ha ma ne gouez ket a hlao en abeg da behejou da bobl ; ha mar pedont ahanout, ha mar meulont da ano, ha mar tistroont diouz o fehejou, pa'z-pezo o glaharet ;

27. Selaou outo euz an neñv, Aotrou, ha distaol pehejou da zervijerien ha da bobl Izrael, ha desk dezo an hent mad dre behini e kerzint ; ha ro glao war an douar eh-eus roet d'az pobl e kerz.

28. Mar sav war an douar eun naonegez pe eur vosenn, pe an duan, pe an tez,

¹⁴⁹ d'ar bobl : "anezo", "dezo", "o zadou" : da dud ar bobl.

pe killeien-raden, pe biskouled ; pe mar deu an enebour, goude beza gwastet ar vro, da daga doriou kêr ; pe ma en-deus eur gouli pe eur hleñved bennag ;

29. Mar deu eur re bennag euz da bobl Izrael d'az pedi : oh anaoud e houli hag e gleñved, ma astenn e zaouarn en ti-mañ,

30. Te a zelaouo outañ euz an neñv, euz al leh uhel e pehini e chomez, hag a ray trugarez, hag a roy da bep hini hervez e heñchou, hervez ma o gweli en o halon (rag n'eus nemedout a gement a anavezje kalonou an dud),

31. Evid ma toujint ahanout, ha ma kerzint en da heñchou e oll zeiziu ha ma vevint war horre an douar, eh-eus roet d'o zadou,

32. Mar deu ivez eun diavêziadn ha ne vezo ket euz da bobl Izrael, euz a eur vro bell, en abeg d'az ano braz, ha d'az torn kreñv, ha d'az preh astennet, ha ma azeul al leh-mañ,

33. Te a zelaouo euz an neñv, euz an oabl e pehini e chomez, hag e ri kement a houlenno an diavêziad-se : evid ma anavezo oll boblou an douar da ano, ha ma toujint ahanout evel ma ra da bobl Izrael, ha ma anavezint penaoz da ano a zo galvet war an ti-mañ em-eus savet.

34. Mar da da bobl d'ar brezel a-eneb heh enebourien, dre an hent dre behini ez-pezo o haset ; mar pedont ahanout, o selloud ouz ar gêr-mañ eh-eus dilennet, hag ouz an ti em-eus savet en da ano ;

35. Te a zelaouo euz an neñv o fedennou hag o goulennou, hag a veñjo anezo.

36. Mar pehont en da eneb (ral n'eus den ebed ha na behje), hag o veza eet droug ennout en o eneb, ma o lakaez etre daouarn o enebourien ; ha mar bezont kaset da sklaved ganto en eun douar a-bell pe a-dost ;

37. Hag o tistrei en o halon, mar greont pinijenn en douar e pehini e vezint bet kaset da sklaved, ha mar pedont ahanout e douar o sklaverez, o lavaroud : Pehet on-eus, droug ha fallagriez on-eus greet :

38. Ha mar distroont ouzit euz o oll galon, hag euz o oll ene, e douar o sklaverez, e pehini e vezint bet kaset, ha ma azeulont ahanout, o selloud ouz an douar eh-eus roet d'o zadou, hag ouz ar gêr eh-eus dilennet, hag ouz an ti em-eus savet d'az ano,

39. Te a zelaouo euz an neñv, da lavaroud eo, euz al leh posteg e pehini e chomez, o fedennou, hag a varno anezo, hag a ray trugarez d'az pobl, petra bennag m'he-devezo pehet.

40. Rag va Doue out : ra vezo digor, me az ped, da zaoulagad, ha ra vezo evezieg da ziskouarn ouz ar pedennou a vezo greet el leh-mañ.

41. Bremañ eta o ! Aotrou Doue, sav en da ehan, te hag arh da nerz ; ra gavo skoazell da veleien, Aotrou Doue, ha ra 'n em laouennay da zent er madou.

42. Aotrou Doue, na zistro ket da zaoulagad diouz da eouliet¹⁵⁰ : az-pezh koun euz a drugareziou David, da zervijer.

VII. Pennad.

An tan a ziskenn euz an neñv war ar viktimou.

Doue en em ziskouez da Zalomon.

1. Hogen pa oe peurhreet e bedenn gand Salomon, an tan a ziskennas euz an

¹⁵⁰ da eouliet : da hini bet eouliet.

neñv, hag a zevas ar sakrifisou-losk hag ar viktimou ; ha meurdez an Aotrou a leunias an ti.

2. Ha ne helle ket ar veleien mond e-barz templ an Aotrou, o veza ma oa leuniet an templ gand meurdez an Aotrou.

3. Hogen pa welas oll vugale Izrael an tan o tiskenn , ha gloar an Aotrou war an ti, en em stlepjont war o genou war leur an ti a oa mein, hag eh azeuljont hag e veuljont an Aotrou, o veza ma eo mad, ha ma eo peurbaduz e drugarez.

4. Neuze ar roue hag an oll bobl a lazas viktimou dirag an Aotrou.

5. Ar roue Salomon a lazas eta e sakrifis daou vil ejenn warn-ugent, ha c’hweh-ugent mil tourh ; hag ar roue, hag an oll bobl, a ouestlas ti Doue.

6. Hogen ar veleien a zalhe o hargou ; hag al Levited a gane gand binviou kanaouennou, en-doa greet ar roue David evid meuli an Aotrou, o veza ma eo peurbaduz e drugarez. Kana a reent eta kanaouennou David gand o binviou ; hag ar veleien a zone gand ar hornou-boud en o raog, hag Izrael oll a oa en e zav.

7. Salomon a zantelas ivez kreiz al leur dirag templ an Aotrou ; rag kinniget en-doa eno sakrifisou-losk, ha lard ar sakrifisou a beoh ; rag an aoter arem en-doa greet ne helle ket derhel ar sakrifisou-losk, ar sakrifisou all, hag al lard.

8. Salomon a reas eta eur gouel en amzer-ze e-pad seiz devez, hag Izrael oll gantañ : braz e oe ar strollad, adaleg ma’z eer e Emat beteg froud an Ejipt.

9. An eizved devez e reas gouel ar strollad, o veza m’en-doa gouestlet an aoter e-pad seiz devez, ha m’en-doa greet gouel an teltou e-pad seiz devez.

10. Evel-se en trede deiz warn-ugent euz ar seizved miz, e kasas kuit ar poblou d’o zeltou, hag i laouen hag anaoudeg euz ar madou en-doa greet an Aotrou da Zavid, ha da Zalomon, ha da Izrael, e bobl.

11. Salomon a beurhreas eta ti an Aotrou, ha ti ar roue ha kement en-doa lakaet en e benn da ober e ti an Aotrou, hag en e di e-unan ; hag eñ a yeas avad da benn.

12. Hogen an Aotrou en em ziskouezas dezañ e-pad an noz, hag a lavaras dezañ : Klevet em-eus da bedenn hag em-eus dilennet al leh-mañ din evid eun ti a zakrifis.

13. Mar serran an neñv, ha ma ne gouez ket a hlao, ha mar gourhemennan d’ar hilleien-raden gwasta an douar ; ha mar kasan ar vosenn e-touez va fobl ;

14. Mar deu va fobl, war behini eo bet galvet va ano, da zistrei ouzin, d’am pedi, da enklaskoud va dremm, ha da ober pinijenn euz he gwall heñchou ; me a zelaouo outi euz an neñv, hag a zistaolo dezi he fehejou, hag a yac’hay o¹⁵¹ douar.

15. Va daoulagad a vezo digor, ha va diskouarn a vezo eveziet ouz pedenn an hini a halvo ahanon el leh-mañ.

16. Rag dilennet ha santellaet em-eus al leh-mañ, evid ma vezo va ano ennañ da-viken, ha ma chomo bepred va daoulagad ha va halon ennañ.

17. Ha te, mar kerzez dirazon ; evel ma en-deus kerzet David, da dad, ha mar grez kement em-eus gourhemennet dit, ha mar mirez va lezennou ha va barnedigeziou,

18. Me a zavo tron da ren, evel ma em-eus roet va ger da Zavid da dad, o lavaroud : Ne vezo ket tennet eun den euz da ouenn euz a briñselez Izrael.

19. Hogen mar distroit diouzin, ha mar dilezit al lezennou hag ar gourhemennou em-eus roet deoh, ha ma’z it da gavoud doueed a-ziavêz, ha d’o azeuli,

¹⁵¹ o : tud va fobl.

20. Me ho tenno diwar horre an douar em-eus roet deoh ; hag an ti-ze em-eus santelet d'am ano a daolin pell diouz va daoulagad, ha me e lakay da veza da zorhenn ha da skwer d'an oll boblou :

21. Hag an ti-ze a vezo greet goap anezañ gand ar re oll a dremeno e-biou, hag a lavaro en o zouez : Perag en-deus greet an Aotrou kement-se d'an douar-mañ, ha d'an ti-mañ ?

22. Hag i a lavaro : O veza ma o-deus dilezet an Aotrou, Doue o zadou, pehini en-deus o zennet euz a zouar an Ejipt ; ha ma o-deus kemeret doueed a-ziavêz, oh azeuli hag o lida anezo : rag se eo eo deuet warnezo an oll reuziou-ze.

VIII. Pennad.

Kalz kêriou a zav Salomon.

Merka a ra kargou ar veleien hag al Levited.

1. Hogen a-benn ugent vloaz goude m'en-doe savet Salomon ti an Aotrou hag e di-e-unan ;

2. E savas Salomon ar hêriou en-doa roet Hiram dezañ, hag e lakaas bugale Izrael da chom enno.

3. Mond a reas ivez e Emat-Suba, hag e perhennas anezi.

4. Sevel a reas ivez Palmira en distro, ha kêriou all kreñv e Emat.

5. Sevel a reas ivez Bethoron an uhella, ha Bethoron an izella, kêriou muriet, gand perzier ha parlou ha potailloù.

6. Hag ivez Balsat, hag an oll gêriou kreñv a oa dezañ, ha kêriou ar hirri, ha kêriou ar varheien ; ha kement a gavas mad Salomon da ober, e savas e Jerzuazlem, hag el Liban, hag e oll zouar e rouantelez.

7. E-keñver an oll bobl a oa chomet euz an Heteed, hag euz an Amorreed, hag euz ar Ferezed hag euz an Heveed, hag euz ar Jebuseed, pere ne oant ket euz a ouenn Izrael ;

8. Hag euz o bugle, hag euz ar re o goude, pere ne oant ket bet lazet gand bugale Izrael ; Salomon o lakaas da baea gwiriou, evel ma reont c'hoaz bremañ.

9. Hogen ne lakaas hini euz a vugale Izrael da zervija da labouriou ar roue : rag i a oa e vrezelidi, hag e genta duged, ha priñsed e girri, hag e varheien.

10. Hogen daou-hant priñs hag hanter-kant a oa war arme ar roue Slomon, pere a rene ar bobl.

11. Kas a reas neuze merh Faraon euz a gêr David d'an ti en-doa savet eviti. Hag ar roue a lavaras : N'eo ket chomet va gwreg e ti David, roue Izrael, o veza ma oa bet santellaet¹⁵² ; dre ma oa eet ennañ arh an Aotrou.

12. Neuze Salomon a ginnigas d'an Aotrou sakrifisou-losk war aoter an Aotrou, en-doa savet dirag ar palier ;

13. Evid ma vije kinniget bemdez warnezi hervez gourhemennou Moizez, e deizioù ar sabbat, eun deizioù kenta euz ar miz, da lavaroud eo, e lid ar bara dihoell, hag e lid ar sizuniou, hag e lid an teltoù.

14. Merka a reas ivez, hervez reiz David, e dad, dleadou ar veleien en o harg, ha re al Levited, hervez o reiz evid meuli ha servija dirag ar veleien, diouz al lid euz a beb devez ; ha re ar borzerien en o rannou a zor e dor : rag evel-se en-doa

¹⁵² o veza ma oa bet santellaet : an ti an hini eo.

gourhemennet David an den Doue.

15. Ar veleien hag al Levited a reas kement a oa bet gourhemennet gand ar roue evid al labouriou, hag ivez evid diwall an teñzoriou.

16. Salomon en-doa kavet pep tra aozet, adaleg an deiz e pehini e tiazezas ti an Aotrou, beteg an deiz e pehini e peurlhreas anezañ.

17. Neuze ez eas Salomon da Asiongaber, ha da Ailat, war aod ar mor Ruz, a zo e douar Edom.

18. Hogen Hiram en-doa kaset dezañ gand e zervijerien, listri ha merdeidi gouizieg diouz ar mor, pere a yeas gand servijerien Salomon da Ofir, hag a zegasas ahano pevar-hant talant aour hag hanetr-kant a rojont d'ar roue Salomon.

IX. Pennad.

Rouanez Saba a zeu da gavoud Salomon. Maro Salomon.

1. Hogen rouanez Saba o veza klevet komza euz a Zalomon, a zeuas da Jeruzalem evid e anaoud gand lavariou goloet ; hag hi he-doa ganti kalz madou, ha kañvaled pere a zouge louzou c'hwez-vad, ha kalz a aour, ha mein talvouduz ; ha pa oe deuet da gavoud Salomon, e lavaras dezañ kement a oa war he halon.

2. Ha Salomon a zisplegas dezi kement he-doa goulennet digantañ ; ha ne oa netra a gement ha na zsiklêrias ket dezi.

3. Pa welas-hi furnez Salomon, hag an ti en-doa savet,

4. Ha boued e daol, ha tiez e zervijerien, ha kargou e vinistred, hag o dillad, hag e goperien, hag o gwiskou, hag ar viktimou a laze d'an Aotrou, gand ar zaouzan ne chomas mui he spered ganti :

5. Hag e lavaras d'ar roue : Gwir eo ar pezh em-eus klevet em bro diwar-benn da zellid ha da furnez.

6. Ha ne greden ket ar pezh a oa bet lavaret din, ken na on deuet, hag em-eus gwelet gand va daoulagad, hag em-eus anavezet penaoz ne oa ket bet lavaret din an hanter euz da furnez ; trehet eo ganez ar vrud euz da zellid.

7. Eüruz eo da dud, eüruz eo da zervijerien, pere a zo bepred dirazout, hag a glev da furnez.

8. Benniget ra vezo an Aotrou, da Zoue, pehini a zo bet fellet gantañ da lakaad war e dron da roue, e leh an Aotrou da Zoue. O veza ma en-deus an Aotrou karet Izrael, ha ma fell dezañ e viroud da viken, rag se en-deus da lakaet da roue warnezañ, evid ma ri barn ha reiz.

9. Hag hi a roas d'ar roue c'hweh-ugent talant aour, ha kalz louzou c'hwez-vad, ha mein talvouduz-braz : biskoaz ne oa bet gwelet kemend-all a louzou c'hwez-vad, evel ma roas rouanez Saba d'ar roue Salomon.

10. Hogen servijerien Hiram gand servijerien Salomon a zegasas aour euz a Ofir, ha koad c'hwez-vad, ha mein talvouduz-braz.

11. Hag ar roue a reas gand ar hoad c'hwez-vad-ze dereziou ti an Aotrou ha ti ar roue, ha telennou ha lirennou evid ar varzed : ha ne oa ket gwelet e Juda an heveleb koad beteg-henn.

12. Hogen ar roue Salomon a roas da rouanez Saba kement ha ma c'hoantaas-hi, ha ma houlennas, ha kalz muioh eged n'he-doa degaset-hi. Hag hi a yeas kuit, hag a zistroas d'he bro gand he zud.

13. Pouez an aour a zouged bep bloaz da Zalomon, oa euz a gant talant aour

c’hweh ha tri-ugent.

14. Heb niveri ar pezh a zegase dezañ kannaded kalz broadou, hag ar varhadourien, hag oll roueed an Arabia, ha renerien ar broiou a gase aour hag arhant da Zalomon.

15. Ar roue Salomon a reas eta daou-hant goaf aour a boueze pep hini c’hweh sikl.

16. Ober a reas ivez tri-hant tirenn aour euz a dri-hant zikl aour pep hini, a oa evid o golei ; hag ar roue o lakaas e-barz ti an armou, a oa e-kreiz eur hoad.

17. Ar roue a reas ivez eun tron braz gand olifant, hag eñ e wiskas gand aour ar glanna.

18. Ar c’hweh daez dre bere e pigned d’an tron, hag ar skabell a oa a aour, ha diou vrehig a bep tu, ha daou leon a oa ouz an diou vrehig :

19. Ha daouzeg leon bihan all war ar c’hweh daez a bep tu :ha ne oe tron heñvel ouz hemañ en oll rouanteleziou.

20. Oll listri taol ar roue a oa a aour, ha listri ti koad al Liban a oa ivez a aour ar glanna ; rag an arhant en amzer-ze a oa prizet evel netra ;

21. Rag listri-mor ar roue a yee eur wech bep tri bloaz gand servijerien Hiram da Darais, hag a zegase ahanao aour hag arhant, hag olifant, ha marmouzed, ha pauned.

22. Ar roue Salomon a oa eta dreist oll roueed an douar gand e vadou hg e hloar.

23. Hag oll roueed an douar a hoantae gweloud Salomon, evid selaoui ar furnez en-doa lakaet Doue en e galon.

24. Hag i a zegase dezañ bep bloaz roou, listri arhant hag aour , ha dillad, hag armou, ha louzou c’hwez-vad, ha kezeg, ha muled.

25. Salomon en-doa ivez daou-ugent mil marh en e varchosiou, ha daouzeg mil karr ha daouzeg mil marheg ; hag eñ o lakaas e kêriou ar hirri, hag el leh ma oa ar roue e Jeruzalem.

26. Astenna a reas ivez e halloud war an oll roueed, adaleg ar ster Euftrat beteg bro ar Filistined, ha beteg harzou an Ejipt.

27. Lakaad a reas an arhant da veza ker stank e Jeruzalem evel ar vein ; ha ma oe gwelet kement a zedr evel a skao-gwrag a zave er mêziou.

28. Degas a reed kezeg dezañ euz an Ejipt, hag euz an oll vroiou all.

29. Oberiou all Salomon, ken ar re genta, ken ar re ziweza, a zo skrivet e levr ar profed Natan, hag e levriou Ahias, ar Siloniad, hag e gweledigez Addo, ar gweler, a-eneb Jeroboam, mab Nabat.

30. Hogen Salomon a renas daou-ugent vloaz e Jeruzalem war Izrael oll.

31. Hag eñ a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet e kêr David ; ha Roboam e vab a renas en e leh.

X. Pennad.

Rann deg breuriez

1. Hogen Roboam a yeas da Zichem : rag eno eo e oa strollet Izrael oll evid e lakaad da roue.

2. Hogen Jeroboam, mab Nabat, pehini a oa tehet en Ejipt rag aon rag Salomon, pa glevas kement-se, a zistroas raktal.

3. Hag i a halvas anezañ, hag eñ a zeuas gand Izrael oll, hag e komzjont ouz Roboam, o lavaroud :

4. Da dad en-doa lakaet warnom eur yeo gwall-galed ; hogen te, skañva renadur kaled da dad, pehini en-doa lakaet warnom eur sklaverez pounner ; tenn eun nebeud euz or beh, ha ni a zervijo ahanout.

5. Hag eñ a lavaras : Goude tri devez distroit d'am havoud. Ha pa eet ar bobl kuit,

6. Ar roue Roboam a zalhas kuzul gand an henaoured a zave dirag Salomon e dad pa edo c'hoaz beo, hag e lavaras : Petra a guzulit din da responta d'ar bobl ?

7. Hag i a lavaras dezañ : Ma eh-eus madelez e-keñver ar bobl-se, ha ma komzez outo en eun doare habask, e servijint ahanout da viken.

8. Hogen eñ a zilezas kuzul an henaoured, hag a zeuas da houlen kuzul digand an dud yaouank, pere a oa bet maget gantañ, hag a oa war e dro ;

9. Hag eñ a lavaras dezo : Petra a vennit-hu, ha petra a dlean-me da responta d'an dud-se, pere o-deus lavaret din : Skañva ar yeo en-deus lakaet da dad warnom ?

10. Hag i a respontas evel tud yaouank, pere a oa bet maget gantañ en dudiu, hag a lavaras : Evel-henn e komzi ouz an dud-se pere o-deus komzet ouzit, o lavaroud : Da dad en-deus lakaet or yeo da veza pounner ; skañva eñ deom : eevl-henn e komzi outo : Va biz bihan a zo tevh eged mell-kein va zad.

11. Va zad en-deus lakaet warnoh eur yeo pounner, ha me hel lakay c'hoaz da veza pounnerroh : va zad en-deus skoet warnoh gand skourjezou, ha me a skoy warnoh gand kraged.

12. Jeroboam hag an oll bobl a zeuas da gavoud Roboam a-benn tri devez, hervez gourhemennou ar roue.

13. Hag ar roue ne zalhas stad ebed euz a guzul an henaoured, hag a lavaras dezo geriou dichek.

14. Komza a reas outo hervez kuzul ar re yaouank : Va zad en-deus lakaet warnoh eur yeo pounner, ha me hel lakay c'hoaz da veza pounnerroh ; va zad en-deus skoet warnoh gand skourjezou, ha me a skoy warnoh gand kraged.

15. Ha ne aotreas ket da bedennou ar bobl : rag youl Doue a oa ma vije sevenet ar ger en-doa lavaret da Jeroboam, mab Nabat, dre henou Ahias, ar Siloniad.

16. Hogen an oll bobl o klevoud geriou dichek ar roue, a lavaras dezañ : N'on-eus lod ebed e David, na degouez ebed e mab Isai. Distro d'az teltou, Izrael ; ha te, David, kee d'az ti da-unan. Hag Izrael en em dennas d'e deltou.

17. Roboam a renas eta war ar vugale euz a Izrael pere a chome e kêriou Juda.

18. Hogen ar roue Roboam a gasas Aduram, pehini a oa war an teltou, ha bugale Izrael a labezas anezañ, hag eñ a varvas ; hag ar roue Roboam a bignas raktal war e garr, hag a dehas da Jeruzalem.

19. Hag Izrael en em rannas euz a di David bete-vremañ.

XI. Pennad.

Ar veleien, al Levited hag ar re oll a zouj Doue a dro etrezeg Roboam.

1. Hogen Roboam a zeuas da Jeruzalem ; hag a strollas oll di Juda ha Benjamin, nao-ugent mil den a-vrezel diouz an dibab, evid stourmi ouz Izrael, hag

e zegasas adarre dindan e halloud.

2. Ha ger an Aotrou a yeas etrezeg Semeias, den Doue, o lavraoud :

3. Kas tud ouz Roboam, mab Salomon, roue Juda, hag ouz oll Izrael, a zo e Juda hag e Benjamin, o lavaroud :

4. Evel-henn e lavar an Aotrou : Ne bignot ket, ha ne vrezelekaot ket ouz ho preudeur : distroet pep hini d'e di, rag dre va youl eo eo bet greet. P'o-doe klevet lavar an Aotrou, e tistrojont, ha ne gerzjont mui a-eneb Jeruzalem.

5. Roboam a chomas eta e Jeruzalem, hag a zavas kêriou muriet e Juda.

6. Sevel a reas e Betlehem, hag Etam, ha Tekue,

7. Ha Betsur, ha Soc'ho, hag Odollam,

8. Ha Get, ha Maresa, ha Zif,

9. Hag Aduram, ha Lac'ha, hag Azeka,

10. Ha Saraa, hag Aialon, hag Hebron, a oa e Juda hag e Benjamin, kêriou kreñv-braz.

11. Ha goude m'en-doe greet muriou tro-war-dro dzo, e lakaas blenerien enno, hag e reas solierou-boued, da lavaroud eo, evid eoul hag evid gwin.

12. E pep kêr e reas tiez-armou evid tirennou ha goafiou ; hag eñ o hreñvaas gand eun hast braz, hag a renas war Juda ha Benjamin.

13. Hogen ar veleien hag al Levited a oa e oll Izrael, a zeuas d'e gavoud euz o oll gêriou,

14. O tilezel o fabourziou hag o madou, evid dond da Juda ha da Jeruzalem, o veza m'en-doa Jeroboam o haset kuit, eñ hag e vibien, evid na rajent ket ar garg a veleien d'an Aotrou.

15. Hag eñ a reas evitañ beleien evid al lehiou uhel, hag evid an diaoulou, hag evid al leueou en-doa greet.

16. Hogen kement hini euz a vreuriezu Izrael en-doa roet e galon evid klask an Aotrou, Doue Izrael, a zeuas da Jeruzalem evid laza o viktimou dirag an Aotrou, Doue o zadou.

17. Evel-se e stardjont rouantelez Juda, hag e kendalhjont Roboam, mab Salomon, e-pad tri bloaz : rag i a gerzas e-pad tri bloaz hepken e heñchou David ha Salomon.

18. Roboam a gemeras da wreg Mahalat, merh Jerimot, mab David ; hag ivez Abihail, merh Eliab, mab Isai.

19. Pehini a hanas dezañ da vibien, Jehus, ha Somoria, ha Zoom.

20. Goude houmañ e kemeras Maac'ha, merh Absalom, pehini a hanas dezañ Abia, hag Etai, ha Ziza, ha Salomit.

21. Hogen Roboam a garas Maac'ha, merh Absalom, dreist e oll wragez hag e zerhed : rag en-doe triweh gwreg, ha tri-ugent serh ; hag eñ a oe tad da eiz mab warn-ugent ha da dri-ugent merh.

22. Hogen lakaad a reas Abias, mab Maac'ha, da benn ha da rener war e oll vreudeur, o veza m'en-doa c'hoant d'e lakaad da roue,

23. Dre ma oa ar furra, hag ar galloudusa etre e oll vibien, hag e oll harzou Juda ha Benjamin, hag en oll gêriou muriet ; hag eñ a roas dezo kalz a voued, hag a houlennans kalz a wragez evito.

XII. Pennad.

Roboam a zilez an Aotrou.

Trehet eo er brezel gand roue an Ejipt.

1. Pa oe kreñvaet ha startaet rouantelez Roboam, e tilezas lezenn an Aotrou, hag Izrael oll gantañ.
2. Hogen er pempved bloaz euz a ren Roboam, e pignas Sesak, roue an Ejipt, a-eneb Jeruzalem (o veza m'o-doa pehet a-eneb an Aotrou),
3. Ha gantañ daouzeg kant karr, ha tri-ugent mil marheg : ha diniver eo ar bobl a zeuas gantañ euz an Ejipt, da lavaroud eo, al Libied, an D/Troglodited, hag an Etioped.
4. Hag eñ a gemeras ar hêriou ar re greñva e Juda, hag a zeuas beteg Jeruzalem.
5. Neuze ar profed Semeias a zeuas da gavoud Roboam ha priñsed Juda, pere a oa en em dennet e Jeruzalem, o tehi dirag Sesak, hag a lavaras dezo : Evel-henn e lavar an Aotrou : Va dilezet hoh-eus, ha me em-eus ho tilezet etre daouarn Sesak.
6. Neuze priñsed Izrael hag ar roue mantret-braz, a lavaras : Gwirion eo an Aotrou.
7. Ha pa welas an Aotrou penaoz e oant izellaet, e teuas ger an Aotrou da Zemeias, o lavaroud : Pa int en em izellaet, n'o dispennin ket, hag e roin dezo eur hennerz bennag, ha va froudenn ne gouezo ket war Jeruzalem dre zorn Sesak.
8. Koulskoude e vezint dindan e halloud, evid ma ouezint pegen disheñvel eo va zervij diouz servij roueed an douar.
9. Sesak, roue an Ejipt, en em dennas eta euz a-zirag Jeruzalem, goude m'endo skrapet teñzoriou ti an Aotrou, ha teñzoriou ti ar roue : o has a reas oll gantañ, hag ivez an tirennou aour en-doa greet Salomon.
10. Hag ar roue a reas en o leh tirennou arem, hag o roas da briñsed an dirennerien, pere a ziwalle dor ti ar roue.
11. Ha pa'z ee ar roue da di an Aotrou, e teue an dirennerien d'o herhoud, hag e tougent anezo goude da di an armou.
12. O veza eta ma oant en em izellaet, buanegez an Aotrou en em dennas diwarnezo, ha ne oant ket dispennet en oll d'an oll : e Juda ivez e oe kavet oberiou mad.
13. Evel-se ar roue Roboam en em greñvaas e Jeruzalem, hag e renas. Eur bloaz ha daou-ugent en-doa pa zeuas da reni, hag eñ a renas seiteg vloaz e Jeruzalem, kêr en-doa dilennet an Aotrou e-touez oll vreuriezou Izrael, evid starda e ano dezo. E vamm a oa anvet Naama, an Ammonitez.
14. Hogen eñ a reas an droug, ha ne aozas ket e galon evid klaskoud an Aotrou.
15. Hogen oberiou Roboam, ken ar re genta, ken ar re ziweza, a zo skrivet e levriou Semeias, ar profed, hag Addo, ar gweler, ha displeget gand preder. Ha Roboam ha Jeroboam a vrezelekaas an eil a-eneb egile keit ha ma vevjont.
16. Ha Roboam a gouskas gand e dadou, hag e oe beziet e kêr David. Hag Abia, e vab, a renas en e leh.

XIII. Pennad.

Maro Jeroboam.

1. En triwehved bloaz euz a ren Jeroboam, e renas Abia war Juda.
2. Tri bloaz e renas e Jeruzalem, hag e vamm a oa anvet Michai, merh Uriel, euz a Habas ; ha brezel a oe etre Abia ha Jeroboam.
3. Pa'z eas Abia d'ar brezel, en-doa tud kaloneg-braz, pevar-hant mil den dilennet. Jeroboam a aozas ivez e arme en e eneb, eiz-kant mil den, tud dilennet, ha kaloneg-braz.
4. Hogen Abia a yeas war menez Semerou, a oa en Efraim, hag a lavaras : Selaou, Jeroboam, hag oll Izrael ivez.
5. Ha ne ouozh-hu ket bremañ penaoz an Aotrou, Doue Izrael, en-deus roet da viken da Zavid ha d'e vibien ar roueelez war Izrael, gand eur gevredigez a holen¹⁵³ ?
6. Penaoz Jeroboam, mab Nabat, servijer Salomon, mab David, a zo savet ha dispahet a-eneb an Aotrou ?
7. Ha penaoz eo en em zastumet war e dro tud dister, mibien Belial, pere a zo bet treh da Roboam, mab Salomon, o veza ma oa Roboam eun den diskiant ha digalon, ha ne helle ket enebi outo.
8. Ha c'hwi a lavar bremañ penaoz e hellit enebi ouz rouantelez an Aotrou, a zo dezañ dre vibien David, ha penaoz hoh-eus eun niver braz a bobl, ha leueou aour en-deus greet Jeroboam deoh da zoueed.
9. Ha c'hwi hoh-eus kaset kuit beleien an Aotrou, mibien Aaron, hag al Levited, hag hoh-eus greet beleien evidoh evel ma ra ar poblou all euz an douar : piou bennag a zeu hag a zakr e zorn o laza eun taro yaouank ha seiz tourh, a zo lakaet da veleg d'ar re n'int ket doueed.
10. Hogen on Aotrou a zo Doue, ha n'on-eus ket e zilezet ; ar veleien a zervij anezañ a zo mibien da Aaron, hag al Levited a zo en o reiz.
11. Kinniga a reer bemdez d'an Aotrou sakrifisou-losk diouz ar mintin ha diouz ar pardaez, ha louzou c'hwez-vad greet hervez al lezenn : lakaad a reer ivez ar baraou war eun daol glan-meurbed ; bez' on-eus ar hantoler aour hag e gleuzeuriou, evid o lakaad da sklêrraad da bep pardaez ; rag ni a vir lezenn an Aotrou, on Doue, hoh-eus dilezet.
12. Doue eta eo ar penn euz on arme, hag e veleien eo a zon ar horn-boud, hag e son en hoh eneb. Bugale Izrael, na stourmit ket a-eneb an Aotrou, Doue ho tadou, rag ne ve ket mad deoh.
13. Pa gomze evel-se, Jeroboam a aoze spiou dezañ war e lerh ; hag o veza en em lakaet rag-eneb d'e enebourien, e ree an dro da Juda gand e arme, ha ma ouie hemañ.
14. Ha Juda a zellas war e lerh, hag a welas penaoz edo ar stourm en e raog ha war e lerh ; hag eñ a harmas ouz an Aotrou ; hag ar veleien a zeraouas seni gand ar horn-boud.
15. Hag oll dud Juda a harmas kaer, ha pa harment, an Aotrou a lakaas ar spont e Jeroboam, hag e oll Izrael a oa rag-eneb da Abia ha da Juda.
16. Ha bugale Izrael a dehas diouz Juda, ha Doue o lakaas etre o daouarn.
17. Abia eta hag e bobl a drehas anezo gand eul lazerez braz : ha pemp-kant mil den euz a Izrael a oe lazet pe gloazet, euz ar re galoneka.
18. Ha bugale Izrael a oe izellaet en darvoud-ze ; ha bugale Juda a oe kennerzet-braz, o veza m'o-doa lakaet o fiziañs en Aotrou, Doue o zadou.
19. Hogen Abias a yeas war-lerh Jeroboam a dehe, hag a gemeras euz e

¹⁵³ eur gevredigez a holen : eur gevredigez gwiriou sakr, ha ne heller ket terri.

gêriou, Betel hag he fabourziou, Jesaria hag he fabourziou, hag Efron hag he fabourziou.

20. Ha Jeroboam ne hellas mui enebi ouz Abia keit ha ma vevas hemañ : hag an Aotrou a skoas gantañ, hag e varvas.

21. Hogen Abia o veza startaet e rouantelez, a gemeras pevarzeg gwreg ; hag eñ a engehentas daou vab warn-ugent, ha c’hwezeg merh.

22. Geriou all Abia, e vuhezegez hag e oberiou, a zo skrivet gand aked e levr Addo, ar profed.

XIV. Pennad.

Asa a ziskar aoteriou an doueed a-ziavêz.

1. Hogen Abia a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet e kêr David ; hag Asa, e vab, a renas en e leh. En e zeizou ar vro a chomas e peoh a-hed deg vloaz.

2. Asa a reas ar pez a oa mad hag hetuz dirag an Aotrou, e Zoue, hag eñ a ziskaras aoteriou an doueed a-ziavêz, hag ivez al lehiou uhel.

3. Ar skeudennou a dorras hag ar hoajou-sakr a ziskaras.

4. Gourhemenni a reas da Juda klaskoud an Aotrou, Doue o zadou, ha miroud al lezenn hag an oll gemennou.

5. Tenna a reas ivez euz a oll gêriou Juda an aoteriou, hag an templou ; hag eñ a renas e peoh.

6. Sevel a reas ivez kêriou kreñv e Juda, o veza ma oa ar peoh gantañ, ne oa savet en amzer-ze brezel ebed en e eneb, ha m’en-doa an Aotrou roet ar peoh dezañ.

7. Rag se e lavaras da Juda : Savom ar hêriou-mañ, ha greom muriou tro-war-dro ; ha kreñvaom-i gand touriou, ha perzier, ha potaiou, endra ma emaom divrezel dre oll, o veza ma on-eus klasket an Aotrou, Doue on tadou, ha ma en-deus roet ar peoh deom tro-war-dro. En em lakaad a rejont eta da zevel kêriou, ha netra ne zeuas da enebi outo.

8. Hogen Asa en-doa en e arme tri-hant mil den euz a Juda pere a zouge tirennou ha goafiou, ha pevarzeg-ugent mil¹⁵⁴ den euz a Venjamin pere a zouge tirennou ha saeziou, oll tud kaloneg-braz.

9. Hogen Zara, an Etiopad, a zeuas er-mêz en o eneb gand eun arme euz a vil-vil¹⁵⁵ den, ha tri-hant karr : hag eñ a zeuas beteg Maresa.

10. Neuze Asa a ziarbennas anezañ, hag a reizas e arme evid ar stourm e traonienn Sefata, a zo tost da Varesa.

11. Hag eñ a bedas an Aotrou Doue, hag a lavaras : Aotrou, n’eus kemm ebed dirazout evid kennerza eun niver braz pe eun niver bihan ; kennerz eta ahanom, Aotrou, on Doue : rag o veza ma ema or fiziañs ennout hag en da ano, eo om deuet a-eneb al lod braz a dud-mañ. Aotrou, on Doue out ; na vezet ket treh an den dit.

12. An Aotrou a spontas eta an Etiopied dirag Asa ha Juda ; hag an Etiopied a dehas.

13. Hag Asa, hag an oll bobl a oa gantañ a yeas war o lerh beteg Gerara : hag an Etiopied a oe dispennet beteg an hini diweza, o veza ma oent skoet gand an Aotrou, endra ma stourme e arme. Hag i a gemeras eur preiz braz.

¹⁵⁴ pevarzeg-ugent mil : 280.000. Doare konta bet savet gand Gonideg.

¹⁵⁵ eun arme euz a vil-vil : eur milion. Doare konta bet savet gand Gonideg.

14. Hag a wastas an oll gêriou war-dro da Herara ; rag eur spont braz a oa kroget en oll ; hag i a wastas ar hêriou, hag a zegasas ganto eur preiz braz.

15. Kalz krevier a zismantjont ivez, hag e tegasjont ganto eul lod braz a zeñved hag a gañvaled ; hag i a zistroas da Jeruzalem.

XV. Pennad.

Diouganuo Azarias.

1. Hogen Azaizas, mab Oded, o veza deuet spered Doue ennañ,

2. A zeuas da ziambroug Asa, hag a lavaras dezañ : Selaouit ahanon, Asa, hag oll Juda ha Benjamin. Ema an Aotrou ganeoh, o veza ma oh bet gantañ. Mar klaskit anezañ, her havot ; hogen mar dilezit anezañ, e tilezo ahanoh.

3. Hogen kalz a zeiziou a dremeno en Izrael heb ar gwir Zoue, hag heb beleg evid deski, hag heb lezenn.

4. Hogen pa zistroint, en o anken, ouz an Aotrou, Doue Izrael, ha pa e glaskint, e kavint anezañ.

5. En amzer-ze ne vezo ket a beoh da neb a yelo e-barz, na da neb a yelo er-mêz ; hogen spont a vezo a bep tu e-touez ar re a chomo er broiou-mañ.

6. Hag eur vroad a stourmo ouz eur vroad, hag eur gêr ouz eur gêr, o veza m' o reustlo an Aotrou gand peb anken.

7. Kalonekait eta, c'hwî, ha na fallaet ket ho taouarn : rag gobr a vezo d' hoh oberiou.

8. Pa glevas Asa ar geriou-ze, ha diouganou ar profed Azarias, mab Oled, en em greñvaas, hag e tennas an idolou euz a oll zouar Juda ha Benjamin, hag euz a gêriou menez Efraim en-doa kemeret ; hag eñ a ouestlas adarre aoter an Aotrou a oa dirag palier ti an Aotrou.

9. Hag eñ a zastumas oll Juda ha Benjamin, ha ganto an diavêzidi euz a Efraim, euz a Vanase, hag euz a Zimeon : rag kalz euz a Izrael a oa deuet d' e gavoud, pa weljont penaoz edo an Aotrou, e Zoue, gantañ.

10. Ha pa oent deuet da Jeruzalem en trede miz, er pemzegved bloaz euz a ren Asa,

11. E lazjont d' an Aotrou en deiz-se, euz an diwisk hag euz ar preiz o-doa degaset, seiz-kant ejenn, ha seiz mil tourh.

12. Hag ar roue a yeas e-barz evid startaad ar gevredigez, evid ma klaskjont an Aotrou, Doue o zadou, euz o oll galon, hag euz o oll ene.

13. Ha piou bennag, emezañ, na glasko ket an Aotrou, Doue Izrael, a varvo, adaleg an disterra beteg ar brasa, adaleg ar gwaz beteg ar vaouez.

14. Hag i a reas le d' an Aotrou gand eur vouez kreñv, ha gand levenez, gand son ar horniou hag an trompillou.

15. Ar re oll a oe e Juda a reas kement-se gand argarzidigez ; rag i a douas a-greiz kalon, hag a glaskas an Aotrou a youl vad, hag a gavas anezañ : hag an Aotrou a roas dezo an ehan tro-war-dro.

16. Asa a dennas ivez ar galloud a rouanez digand Maac'ha, e vamm, o veza m' he-doa-hi savet, en eur hoad-sakr, eun idol da Briap, pehini a dorras, a vruzunas, hag a zevas froud Sedron.

17. Chom a reas c'hoaz lehiou uhel en Izrael ; hogen kalon Asa a oe klok¹⁵⁶ e-pad e oll zeiziu.

18. Kas a reas da di an Aotrou kement a oa bet gouestlet gand e dad ha gantañ, arhant, hag aour, ha kalz listri.

19. Ha ne oe ket a vrezel beteg ar pempved bloaz ha tregont euz a ren Asa.

XVI. Pennad.

Kleñved ha maro Asa.

1. Hogen er c'hwehved bloaz ha tregont euz a ren Asa, Baasa, roue Izrael, a bignas e Juda, hag a zavas eur vur tro-war-dro da Rama, evid na hellje hini euz a rouantelez Asa mond er-mêz nag e-barz.

2. Neuze Asa a gemeras an arhant hag an aour a oa e teñzoriou ti an Aotrou, hag e teñzoriou ar roue, hag o hasas da Venedad, roue Siria, pehini a chome e Damas, o lavaroud :

3. Kevredigez a zo etre te ha me, evel ma ez eus bet unvaniez etre va zad ha da hini ; rag-se em-eus kaset aour hag arhant dit, evid ma torri ar gevredigez a zo etre te ha Baasa, roue Izrael, ha ma likii anezañ da bellaad diouzin.

4. Pa glevas kement-se, Benadad a gasas priñsed e armou a-eneb kêriou Izrael ; hag i a gemeras Ahiou ha Dan, hag Abelmaim, hag an oll gêriou muriet euz a Neftali.

5. Ha pa glevas Baasa kement-se, eh ehanas sevel Rama, hag e tibaouezas e labour¹⁵⁷.

6. Neuze ar roue Asa a gemeras oll dud Juda, pere a zegasas euz a Rama ar vein hag ar hoad a oa bet aozet gand Baasa evid sevel kêr, hag eñ a zavas ganto Gabaa ha Masfa.

7. En amzer-ze e teuas Hanani, ar profed, da gavoud Asa, roue Juda, hag a lavaras dezañ : O veza ma eh-eus lakaet da fiziañs e roue Siria, ha n'eh-eus ket he lakaet en Aotrou, da Zoue, rag-se arme roue Siria a zo tehet diouz da zorn.

8. An Etiopied hag an Libied, ha ne oa ket kalz muioh anezo, gand o hirri, o marheien, hag al lod braz a dud ? Koulskoude o veza ma eh-eus lakaet da fiziañs en Aotrou, en-deus-eñ o lakaet etre da zaouarn.

9. Rag daoulagad an Aotrou a zell ouz an douar oll ; hag eñ a ro nerz d'ar re a gred ennañ a wir galon. En eun doare diskiant out eta en em renet ; ha dre ze e savo a-vremañ brezeliou en da eneb.

10. Hiogen Asa o veza savet droug ennañ a-eneb ar gweler, a hourhemennas e lakaad er vah, rag kement-se en-doa e heget kaer ; hag eñ a lazaz kalz euz ar bobl en amzer-ze.

11. Hogen oberiou Asa, ken ar re genta, ken ar re ziweza, a zo skrivet e levr roueed Juda hag Izrael.

12. Hogen Asa a gouezas klañv en naved bloaz ha tregont euz e ren, gand eun droug braz en e dreid ; ha ne glaskas ket an Aotrou¹⁵⁸ en e boan ; hogen e fizias muioh e gwiriegez al louzaouerien.

¹⁵⁶ klok : penn-da-benn d'an Aotrou.

¹⁵⁷ e tibaouezas e labour : e tiskrogas diouz e labour.

¹⁵⁸ ha ne glaskas ket an Aotrou : hag eñ ne glaskas ket an Aotrou...

13. Hag eñ a gouskas gand e dadou ; hag a varvas er henta bloaz ha daou-ugent euz e ren.

14. Hag i a vezias anezañ er bez en-doa toullet evitañ e kêr David ; hag i a lakaas anezañ war e wele leun a louzou c’hwez-vad, hag a dredou serhed¹⁵⁹, aozet gand ijin an dramourien¹⁶⁰ ; hag i o devas warnezañ gand lid braz.

XVII. Pennad.

Doujañs Josafat e-keñver Doue.

1. Hogen Josafat, e vab, a renas en e leh, hag eñ a oe treh da Izrael.

2. Soudarded a lakaas e gward en oll gêriou Juda a oa serret gand muriou : lakaad a reas ivez gwarded e douar Juda, hag e kêriou Efraim a oa bet kemeret gand Asa, e dad.

3. An Aotrou a oe gand Josafat, o veza ma kerzas e heñchou kenta David, e dad, ha ne lakaas ket e fiziañs e Baalim,

4. Hogen e Doue e dad ; hag eñ a gerzas bepred en e gelennou, ha ne heulias ket direizou Izrael.

5. Rag se an Aotrou a startaas ar rouantelez en e zorn, ha Juda oll a zegasas rou da Josafat ; evel-se e teuas dezañ kalz a vadou hag eur hloar vraz.

6. Hag evel ma oa e galon leun a nerz e heñchou an Aotrou, e tiskaras ivez al lehiou uhel hag ar hoajou-sakr a oa e Juda.

7. En trede bloaz euz e ren e kasas euz e briñsed, Benhail, hag Obdias, ha Zac’harias, ha Natanael, ha Mic’heas, evid deski ar bobl e kêriou Juda :

8. Ha ganto Levited, Semeias, ha Natania, ha Zabadias, hag Asael, ha Semiramot, ha Jonatan, hag Adonias, ha Tobias, ha Tobadonias, al Levited, ha ganto Elisama, ha Joram, ar veleien :

9. Hag i a zeske pobl Juda, o tougen ganto levr lezenn an Aotrou ; mond a reent e kêriou Juda tro-war-dro, hag e teskent ar bobl.

10. Rag se spont an Aotrou a gouezas war an oll rouanteleziou a oa war-dro Juda, ha na gredent ket brezelekaad ouz Josafat.

11. Ar Filistined o-unan a gase rou da Josafat, hag a bae dezañ gwiriou arhant. An Arabied a zegase ivez chatal, seiz mil seiz-kant tourh, ha kemend-all a vouhed.

12. Josafat eta a zeuas da veza kreñv, hag a zeuas uhel-braz ; sevel a reas e Juda tiez e doare touriou, ha kêriou muret.

13. Kalz labouriou a reas e kêriou Juda : tud a-vrezel ha tud kreñv a oa e Jeruzalem ;

14. Ha setu amañ an niver anezo, hervez an tiez hag an tiadou anezo : e Juda priñsed an arme, Eduas an dug, ha gantañ tri-hant mil den euz ar re galoneka.

15. Goude hemañ Johanan, ar priñs, ha gantañ daou-hant mil ha pevar-ugent mil.

16. Goude hemañ, Amasias, mab Zec’hri, gouestlet d’an Aotrou, ha gantañ daou-hant mil den kreñv-braz.

17. War-lerh hemañ e teue Eliada, kaloneg er stourmou, ha gantañ daou-hant

¹⁵⁹ a dredou serhed : ?

¹⁶⁰ an dramourien : ar re a ra traou c’hwez-vad.

mil pere a zouge gwaregou ha tirennou.

18. Goude hemañ, Jozabad, ha gantañ kant mil ha pevar-ugent mil den dare d'ar stourm.

19. Ar re-mañ oll a oa dindan dorn ar roue, heb niveri ar re all en-doa lakaet er hêriou muriet, dre Juda oll.

XVIII. Pennad.

Kevredigez Josafat gand Ac'hab, roue Izrael.

1. Josafat a oe eta pinvidig ha brudet-braz, hag eñ en em unanas gand Ac'hab dre nesanded.

2. A-benn eur bloavez bennag e tiskennas etrezeg ennañ¹⁶¹ e Samari ; ha pa zeuas, Ac'hab a lazas deñved hag ejenned eun niver braz, en abeg dezañ ha d'an dud a oa deuet gantañ ; hag eñ a alias Josafat da bigna gantañ da Ramot-Galaad.

3. Hag Ac'hab, roue Izrael, a lavaras da Josafat, roue Juda : Deus ganen da Ramot-Galaad. Ha Josafat a lavaras dezañ : A-unan on ganez : evel da bobl eo va fobl : ganez ez aim d'ar brezel.

4. Ha Josafat a lavaras ivez da roue Izrael : Goulenn kuzul hirio, me az ped, digand ger an Aotrou.

5. Roue Izrael a strollas eta pevar-hant profed, hag a lavaras dezo : Ha ni a dle mond da Ramot-Galaad evid brezelekaad, pe ne dleom-ni ket ? Hag i a lavaras : Pign, ha Doue e lakay etre daouarn ar roue.

6. Ha Josafat a lavaras : Ha n'eus ket amañ ivez eur profed d'an Aotrou, evid ma houlenim kuzul digantañ ?

7. Ha roue Izrael a lavaras da Josafat : Eun den a zo digand pehini e hellom goulenni youl an Aotrou : hogen kas em-eus outañ, o veza ne ziougan mad ebed din, hogen droug bepred : Mic'heas eo, mab Jemla. Ha Josafat a lavaras : O roue, na gomz ket evel-se.

8. Ha roue Izrael a halvas unan euz e spazeien, hag a lavaras dezañ : Galv raktal Mic'heas, mab Jemla.

9. Hogen roue Izrael, ha Josafat, roue Juda, a oa azezet pep hini war e dron, ha gwisket en o dillad roue ; azezet e oant el leur a zo war harz porz Samari ; hag ar brofeded oll a ziougane dirazo.

10. Neuze Sedesias, mab Kanaana, a reas evitañ kerniel houarn, hag a lavaras : Evel-henn e lavar an Aotrou : Gand ar re-mañ e skoi war Siria, ken n'az-pezo he brevet.

11. Hag an oll brofeded a ziougane, o lavaroud : Pign da Ramot-Galaad, hag e vezi treh, hag an Aotrou he¹⁶² lakay etre daouarn ar roue.

12. Hogen ar hannad a oa eet da hervel Mic'heas, a lavaras dezañ : Setu geriou an oll brofeded a ziougan traou mad d'ar roue ; me az ped eta na vezo ket disheñvel da lavar diouz o hini, ha ma tiougani traou mad.

13. Ha Mic'heas a lavaras dezañ : Evel ma eo beo an Aotrou, e livirin kement a lavaro va Doue din.

¹⁶¹ ennañ : Ac'hab.

¹⁶² he : Ramot-Galaad.

14. Dond a reas eta da gavoud ar roue ; hag ar roue a lavaras dezañ : Mic'heas, ha ni a dle mond da Ramot-Galaad evid brezelekaad, pe ne dleom ket ? Hag eñ a lavaras d'ar roue : Pignit : dond a reot a-benn euz a bep tra, hag an enebourien a vezo lakaet etre ho taouarn.

15. Hag ar roue a lavaras : C'hoaz ha c'hoaz ez pedan, na liviri din nemed nemed ar pez a zo gwir, e ano an Aotrou.

16. Ha Mic'heas a lavaras : gwelet em-eus Izrael oll skignet dre ar meneziou, evel deñved heb mesaer ; hag an Aotrou en-deus lavaret : Ar re-ze n'o-deus ket a vestr ; distroet pep hini e peoh d'e di.

17. Ha roue Izrael a lavaras da Josafat : ha n'em-eus-me ket lavaret dit penaoz an den-ze ne ziougan morse netra a vad din, hogen peb droug ?

18. Ha Mic'heas a lavaras c'hoaz : Selaouit eta ger an Aotrou : Gwelet em-eus an Aotrou azezet war e dron, hag oll arme an neñv en e zav war e dro a-zehou hag a-gleiz.

19. Hag an Aotrou a lavaras : Piou a douello Ac'hab, roue Izrael, evid ma pigno da Ramot-Galaad, ha ma kouezo eno ? Hag evel ma lavare unan en eun doare, hag eun all en eun doare all ;

20. Ar spered droug a yeas hag a zavas dirag an Aotrou, hag a lavaras : Me e douello. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : Penaoz e touelli anezañ ?

21. Hag eñ a lavaras : Mond a rin, hag e vezin eur spered gaouiad e genou e oll brofeded. Hag an Aotrou a lavaras : E douella a ri, hag e trehi anezañ. Kee kuit, ha gra evel-se.

22. Bremañ eta setu en-deus an Aotrou lakaet eur spered a hevier e genou da oll brofeded, hag an Aotrou en-deus lavaret droug diwar da benn.

23. Hogen Sedesias, mab Kanaana, a dostaas, a skoas war javed Mic'heas, hag a lavaras : Dre be hent eo eñ eet spered an Aotrou diouzin, evid komza ouzit ?

24. Ha Mic'heas a lavaras : Te da-unan her gwelo, en deiz e pehini e tremeni euz an eil kamb d'eben evid en em guza.

25. Hogen roue Izrael a hourhemennas, o lavaroud : Kemerit Mic'heas, ha kasit eñ da Amon, priñs kêr, ha da Joas, mab Amelec'h ;

26. Ha livirit : Evel-henn e lavar ar roue : Kasit hemañ d'ar vah, ha roit dezañ eun nebeud bara, hag eun nebeud dour, ken na zistroin e peoh.

27. Ha Mic'heas a lavaras : Mar distroez e peoh, n'en-deus ket an Aotrou komzet ennon. Hag eñ a lavaras c'hoaz : Selaouit, oll boblou.

28. Roue Izrael ha Josafat, roue Juda, a bignas eta da Ramot-Galaad.

29. Ha roue Izrael a lavaras da Josafat : Me a nevez va dillad, hag ez in evel-se d'ar brezel ; hogen te, gwisk da zillad. Roue Izrael o veza eta nevezet e zillad, a yeas d'ar brezel.

30. Hogen roue Siria en-doa gourhemennet da briñsed e varheien, o lavaroud : Na stourmit nag ouz bihan, nag ouz braz, hogen hepken ouz roue Izrael.

31. Pa welas eta priñsed ar varherien Josafat, e leverjont : Roue Izrael eo hennez. Hag i en em lakaas war e dro en eur stourmi ; hogen eñ a harmas ouz an Aotrou, pehini a gennerzas anezañ, hag o fellaas dioutañ.

32. Rag pa welas priñsed ar varheien penaoz ne oa ket eñ roue Izrael, e tilezjont anezañ.

33. Hogen c'hoarvezoud a reas penaoz unan euz ar bobl a dennas eur zaez diouz an darvoud, hag a skoas roue Izrael etre ar gouzoug hag an diskoaz. Hag eñ a lavaras d'e garr-rener : Tro da zorn, ha tenn ahanon euz an emgann, rag gouliet on.

34. Hogen an emgann a badas 'hed an deiz-se. Koulskoude roue Izrael a chomas en e garr troet ouz ar Siried beteg ar pardaez ; hag eñ a varvas e tro ar huzheol.

XIX. Pennad.

Tamallet eo Josafat o veza m'en-doa kennerzet Ac'hab.

1. Hogen Josafat, roue Juda, a zistroas e peoh d'e di e Jeruzalem.
2. Ha Jehu, ar gweler, mab hanani, a yeas war e arbenn, hag a lavaras dezañ : Da eur fallagr e roez kennerz, hag en em unani a rez gand ar re o-deus kas oh an Aotrou. Rag se ez-poa dellezet buanegez an Aotrou.
3. Hogen oberiou mad a zo en em gavet ennout, o veza ma eh-eus diskaret ar hoajou-sakr a oa e bro Juda, ha ma eh-eus aozet da galon evid klaskoud an Aotrou, Doue da dadou.
4. Josafat a chomas eta e Jeruzalem ; hag eñ a yeas adarre etrezeg e bobl adaleg Bersabes beteg menez Efraim : hag e halvas anezo eun eil gwech etrezeg an Aotrou, Doue o zadou.
5. Lakaad a reas ivez barnerien en oll gêriou-kreñv euz a Juda, ha dre oll.
6. Hag o hourhemenni d'ar varnerien, e lavaras dezo : Gwelit petra a reot ; rag n'eo ket barn an den, hogen barn an Aotrou a zevenit ; ha kement ho-pezo barnet, a gouezo warnoh.
7. Bezet doujañs an Aotrou ganeoh, ha grit pep tra gand preder ; rag n'eus ket a fallagriez en Aotrou, na kemm¹⁶³ ebed evid den, na c'hoant gobr.
8. Josafat a lakaas ivez e Jeruzalem Levited, ha beleien, ha priñsed tiadou Izrael, evid ma varnjent ar re a chome enni, hervez lezenn an Aotrou ha lezenn an dud.
9. Hag eñ a hourhemennas dezo, o lavaroud : Evel-henn e reot e doujañs an Aotrou gand lealded ha gand eur galon hwek.
10. Pa zeuy eta dirazoh eun diviz bennag euz ho preudeur pere a chom en o hêriou, pe diwar-benn an tiadou, pe diwar-benn al lezenn, pe ar gourhemennou hag al lidou, pe ar helennou : kelennit anezo, evid na behint ket a-eneb an Aotrou, ha na zeuy ket e vuanegez warnoh ha war ho preudeur ; oh ober evel-se ne behot ket.
11. Amarias, ho peleg-braz, a vezo da benn deoh e kement a zell ouz Doue ; ha Zabadias, mab Ismael, a zo e penn ti Juda, e kement a zell ouz servij ar roue. Bez' hoh-eus ivez en ho touez al Levited da Vistri : en em greñvait, ha grit kement-se gand preder, hag an Aotrou a vezo ganeoh evid ho mad.

XX Pennad.

Kalz enebourien a zav a-eneb Josafat. Treh eo dezo.

1. Goude-ze mibien Moab, ha mibien Ammon en em strollas, ha ganto ar re a

¹⁶³ kemm : displealded.

oa kevred gand an Ammonited ; a-eneb Josafat, evid stourmi outañ.`

2. Kannaded a zeuas, hag a zanevellas kement-se da Josafat, o lavaroud : Eul lod braz a dud a zo en da eneb, euz al lehiou a zo en tu all d'ar mor, hag euz ar Siria, ha setu o-deus azezet o hamp e Asasonthamar, a zo Engaddi.

3. Hogen Josafat, spontet-braz, en em roas oll da bedi an Aotrou, hag a embannas eur yun dre oll Juda.

4. Ha Juda en em zastumas evid pedi an Aotrou ; hag an oll a zeuas er-mêz euz o hêriou evid e bedi.

5. Ha pa oe savet Josafat e-kreiz strollad Juda ha Jeruzalem, e ti an Aotrou dirag ar porched nevez,

6. E lavaras : Aotrou, Doue on tadou, te a zo Doue an neñv, ha te a zo mestr war oll rouanteleziou ar broadou ; en da zorn ema an nerz hag ar galloud, ha den ne hell enebi ouzit.

7. Ha n'eo ket te on Doue pehini eh-eus lazet dirag da bobl Izrael ar re oll a chome er vro-mañ, hag eh-eus e roet da ouenn Abraham, da vignon, da viken.

8. Hga i a zo chomet enni, hag i o-deus savet enni eur santuar d'az ano, o lavaroud :

9. Mar kouez warnom an drougou, kleze ar varn, ar vosenn, hag an naonegez, e savim dirazout en ti-mañ, e pehini eo bet pedet da ano ; ha ni a harmo etrezeg ennout en on enkrezo ha te a glevom ouzom, hag a zieubo ahanom.

10. Setu eta bremañ mibien Ammon ha Moab, hag ar re a chom war menez Seir, war douar pere ne fellas ket dit e tremenje Izrael pa zeujent er-mêz euz an Ejipt, hogen ma tistrofent diouto, ha na lazjent ket anezo ;

11. Hag i a ra an eneb, hag a laka o foan d'or has kuit euz an douar eh-eus roet deom e kerz.

12. O ! on Doue-ni, ha ne varni ket eta ar re-ze ? Rag n'eus ket a nerz a-walh ennom, evid ma hellfem enebi ouz al lod braz a dud-se a zeu d'en em deurel warnom. Hogen pa ne ouzom ket petra on-eus da ober, n'eus netra gwelloc'h evidom eged teurel on daoulagad etrezeg ennoud.

13. Hogen Juda oll a oa en e zav dirag an Aotrou, gand o mibien, o gwrazez, hag o bugaligou.

14. Eno e oa ivez Jahaziel, mab Zac'harias, mab Banaias, mab Jehiel, mab Matanias. Levited euz a vibien Azaf, a behini e tiskennas spered an Aotrou e-kreiz ar vrad tud ;

15. Hag eñ a lavaras : Selaouit, Juda oll, ha c'hwi pere a chom e Jeruzalem, ha te, roue Josafat. Setu petra a lavar deoh an Aotrou : N'ho-pezet ket a aon, ha na spontit ket rag al lod braz a dud-se, rag n'eo ket ho stourm, hogen hini Doue.

16. Warhoaz e tiskennot en o eneb ; rag i a bigno dre ar grehenn anvet Sis ; ha c'hwi o havo e penn ar froud a zo rag-eneb da zistro Jeruel.

17. N'eo ket c'hwi a stourmo, hogen chomit en ho sav gand fiziañs, hag e welot kennerz an Aotrou warnoh, o ! Juda ha Jeruzalem. N'ho-pezet ket a aon, ha na spontit ket, warhoaz e kerzot en o eneb, hag an Aotrou a vezo ganeoh.

18. Neuze Josafat, ha Juda, hag ar re aoll a chome e Jeruzalem, en em daolas war o genou d'an douar, dirag an Aotrou, hag a veulas anezañ.

19. Hogen al Levited, mibien Kaat, ha mibien Kore, a veule an Aotrou, Doue Izrael, ken uhel ha ma hellent.

20. Hag o veza savet diouz ar mintin, e treuzjont distro Tekue ; ha pa oant en hent, Josafat o sevel en o hreiz, a lavaras : Selaouit ahanon, tud Juda, ha c'hwi oll a chom e Jeruzalem ; likit ho fiziañs en Aotrou, ho Toue, ha n'ho-pezet ket a aon ;

kredit ar pezh o-deus lavaret e brofeded, ha pep tra a zeuy da vad deoh.

21. Hag eñ o veza roet an ali-ze d'ar bobl, a lakaas kanerien a-vandennou, e-raog an arme ; evid meuli an Aotrou, o lavaroud en eur vouez : Ho-pezet fiziañs en Aotrou, rag peurbaduz eo e drugarez.

22. Ha pa zeujont da gana ar meuleudiou, an Aotrou a droas spiou an enebourien en o eneb o-unan, da lavaroud eo, ouz mibien Ammon, ha Moab, hag a-eneb ar re a chome war menez Seir pere a oa bet deuet evid stourmi ouz Juda ; hag i a oe trehet.

23. Rag mibien Ammon ha Moab a zavas a-eneb ar re a chome war menez Seir, o lazas hag o zrehas ; ha p'o-doe peurhreet kement-se, en em drojont outo o-unan, hag en em lazjont an eil egile.

24. Hogen pa oe deuet Juda d'al leh uhel-ze, a zo rag-eneb d'an distro, e weljont a-bell ar gompezenn oll goloet a gorrvou maro, heb ma oa chomet hini beo.

25. Josafat a zeuas eta gand oll dud, evid kemeroud diwisk ar re varo ; hag i a gavas e-touez ar re varo kalz arrebeuri, ha dillad, ha listri talvouduz-braz, a gasjont ganto : hogen ne helljont ket o has oll ganto a-hed tri devez, ker braz e oe ar preiz.

26. Hogen ar pevare deiz en em strolljont e traonienn ar vennoz : rag o veza m'o-doa benniget an Aotrou eno, e halvjont al leh-se traonienn ar Vennoz, hag eo galvet beteg-henn.

27. Hag oll dud Juda, hag ar re a chome e Jeruzalem, ha Josafat en o raog, a zistroas laouen-braz da Jeruzalem, o veza m'en-doa an Aotrou roet an treh dezo war o enebourien.

28. Hag i a zeuas e Jeruzalem, hag e ti an Aotrou, gand telennou, ha tirennou, ha bombardou.

29. Hogen spont an Aotrou a gouezas war oll rouanteleziou an douar, pa glevjont penaoz en-doa stourmet an Aotrou a-eneb enebourien Izrael.

30. Evel-se rouantelez Josafat a chomas en ehan, ha Doue a roas dezañ ar peoh tro-war-dro.

31. Josafat a renas eta war Juda, ha pemp bloaz ha tregont en-doa pa zeuas da reni : p-zemp bloaz warn-ugent e renas e Jeruzalem ; hag e vamm a oa anvet Azuba, merh Selabi.

32. Hag eñ a gerzas e hent Asa, e dad, ha ne zistroas ket dioutañ ; hag e reas ar pezh a oa mad dirag an Aotrou.

33. Koulskoude ne ziskaras ket al lehiou uhel, hag ar bobl n'he-doa ket c'hoaz troet he halon ouz an Aotrou, Doue he zadou.

34. Oberiou all Josafat, ken ar re genta, ken ar re ziweza, a zo skrivet e-mesk lavariou Jehu, mab Hanani, en-deus lakaet e levriou roueed Izrael.

35. Goude-ze Josafat, roue Juda, en em unanas gand Oc'hezias, roue Izrael, pehini a oa eun den fallagr-meurbed.

36. Hag eñ en em unanas gantañ evid ober listri-mor da vond da Darsis ; hag i a reas o listri e Asiongaber.

37. Hogen Eliezer, mab Dodan, euz a Varesa, a ziouganas da Josafat, o lavaroud : O veza ma eh-eus greet kevredigez gand Oc'hezias, an Aotrou en-deus skoet gand da oberiou ; da listri a zo bet brevet ha n'o-deus ket gallet mond da Darsis.

XXI. Pennad.

Fallagriez Joram.

1. Josafat a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet ganto e kêr David : ha Joram, e vab, a renas en e leh.
2. Hemañ en-doe da vreuteur, mibien Josafat, Azarias, ha Jabel, ha Zac'harias, hag Azarias, ha Mikael, ha Safatias ; oll vibien da Josafat, roue Juda.
3. O zad a roas dezo kalz arhant hag aour, ha goprou beb bloaz, gand kêriou-kreñv e Juda ; hogen ar rouantelez a roas da Joram, o veza ma oa eñ ar henta-ganet.
4. Joram a zavas eta war rouantelez e dad ; ha pa oe en em stardet, e lasas gand ar hleze e oll vreuteur ha lod euz a briñsed Izrael.
5. Daou vloaz ha tregont en-doa Joram pa zeuas da reni ; hag eñ a renas eiz vloaz e Jeruzalem.
6. Kerzoud a reas e heñchou roueed Izrael, evel m'en-doa greet ti Ac'hab ; rag merh Ac'hab a oa da wreg dezañ, hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou.
7. Hogen an Aotrou ne fellas ket dezañ koll a-grenn ti David, en abeg d'ar gevredigez en-doa greet gantañ, hag o veza m'en-doa roet e her penaoz e roje dezañ eur houlaouenn, ha d'e vibien da viken.
8. En deziou-ze en em zispahas Edom, evid na vije mui dindan beli Juda ; hag eñ a reas eur roue evitañ e-unan.
9. Hogen en em lakaas en hent gand priñsed e arme, hag e oll varheien. Sevel a reas a-zoug an noz, ken e skoas gand Edom a oa en em lakaet war e dro, ha gand oll zugez e varheien.
10. Edom eta zispahas beteg-henn, evid na vije mui dindan beli Juda. En amzer-ze Lobaa en em dennas ivez euz a-zindan e zorn, o veza m'en-doa dilezet an Aotrou, Doue o zadou.
11. Ouspenn e lakaas da zevel lehiou uhel e kêriou Juda, hag e lakaas tud Jeruzalem da goueza er hadaliez ha re Juda da derri lezenn Doue.
12. Hogen degaset e oe dezañ eul lizer digand Elias, ar profed, war pehini e oa skrivet : Evel-henn e lavar an Aotrou, Doue David, da dad : O veza n'eh-eus ket kerzet e heñchou Josafat, da dad, hag e heñchou Asa, roue Juda ;
13. Hogen ma eh-eus heuliet hent roueed Izrael, ha ma eh-eus lakaet tud Juda ha re Jeruzalem da goueza er hadaliez, oh heulia gadaliez ti Ac'hab ; ha ma eh-eus ouspenn lazet da vreuteur, mibien da dad, gwelloc'h egedout,
14. Setu an Aotrou a skoy gand eur gouli braz warnout, ha war da bobl, ha war da vibien, ha war da wragez, ha war da oll dra.
15. Ha te a vezo klañv gand eur hleñved droug en da gov, ken na zeuy er-mêz bemdez a nebeud e nebeud da vouzellou.
16. An aotrou a lakaas eta da zevel a-eneb Joram spered ar Filistined hag an Arabed, pere a zo war harzou an Etiopied.
17. Hag a bignas da zouar Juda, hag a wastas anezañ, hag a gasas ganto kement a gavjont e ti ar roue, hag ivez e vibien, hag e wragez ; ha ne chomas hini euz e vibien, nemed Joac'haz, pehini a oa ar yaouanka.
18. Hag ouspenn kement-se oll, an Aotrou a zegasas dezañ en e gov eur hleñved ne oa ket evid beza pareet.
19. Hga an deziou hag an amzeriou o vond an eil war-lerh egile, e tremenas daou vloaz : en heveleb doare ma teuas gand an amzer e vouzellou da vreina ha da zond er-mêz. N'ez eas e gleñved dioutañ nemed gand e vuhez, hag eñ a varvas euz a eur gwall gleñved. Hag ar bobl ne reas ket dezañ eur hañv kaer o tevi louzou,

evel ma oa bet greet d'e dadou.

20. Daou vloaz ha tregont en-doa Joram pa zeuas da reni, hag eñ a renas eiz vloaz e Jeruzalem ; hogen ne gerzas ket dre an hent eeun. Beziet e oe e kêr David ; hogen ne oe ket lakaet e bez ar roueed.

XXII. Pennad.

Oc'hozias, roue Juda, roue Izrael, a zo laz et gand Jehu.

1. Hogen tud Jeruzalem a lakaas Oc'hozias, e vab yaouanka, da roue en e leh ; rag e vreudeur hena a oa bet laz et gand laeron Arabed a oa en em daolet war ar hamp. Evel-se Oc'hozias, mab Joram, roue Juda, a renas.

2. Daou vloaz ha daou-ugent en-doa Oc'hozias, pa zeuas da reni ; hag eur bloaz e renas e Jeruzalem ; e vamm a oa anvet Atalia, merh Amri.

3. Hemañ a heulias ivez heñchou ti Ac'hab ; rag e vamm a zougas anezañ da ober droug.

4. An droug a reas eta dirag an Aotrou, evel ti Ac'hab ; rag hi eo a alias anezañ goude maro e dad, hag a gollas anezañ.

5. Hag eñ a gerzas hervez heh aliou ; hag a yeas d'ar brezel gand Joram, mab Ac'hab, roue Izrael, a-eneb Hazael, roue Siria, e Ramot-Galaad ; hag ar Siried a hloazas Joram.

6. Hag eñ a zistroas da Jezrabel evid en em louzaoui, rag kalz gouliou a oa bet greet dezañ en emgann-ze. Oc'hozias, mab Joram, roue Juda, a ziskennas eta evid gweloud Joram, mab Ac'hab, a oa klañv e Jezrabel.

7. Ha dre youl Doue eo a-eneb Oc'hozias, e teuas hemañ da gavoud Joram, ha, pa oa deuet, ma'z eas gantañ a-eneb Jehu, mab Namsi, a oa bet eouliet gand an Aotrou evid kas da get ti Ac'hab.

8. Ha pa waste Jehu ti Ac'hab, e kavas priñsed Juda, ha mibien breudeur Oc'hozias, pere a zervije anezañ ; hag eñ a lazas anezo.

9. O klask ivez Oc'hozias, e oe kroget ennañ pa oa kuzet e Samari, kaset e oe dezañ, hag eñ hel lazas. Beziet e oe, o veza ma oa mab da Joram, pehini en-doa klasket an Aotrou a-greiz e galon ; hogen ne helled mui geda e teuje da reni hini euz a ouenn Oc'hozias.

10. Rag pa welas Atalia, e vamm, penaoz e oa maro he mab, e savas-hi, hag e lazas ar re oll euz a ouenn ar roue Joram.

11. Hogen Josabet, merh ar roue, a gemeras Joas, mab Oc'hozias, hag a laeras anezañ euz a vesk mibien ar roue, pa laz et anezo ; hag hi a guzas anezañ gand e vagerez e kambr ar gweleou. Hogen Josabet, pehini he-doa e guzet, a oa merh d'ar roue Joram, gwreg da Joiada, ar beleg-braz, ha c'hoar da Oc'hozias ; rag se Atalia ne hellas ket e laza.

12. Joas a oe eta kuzet gand ar veleien e ti Doue, a-hed c'hweh vloaz, e-pad pere e renas Atalia war ar vro.

XXIII. Pennad.

Joas, d'an oad a zeiz vloaz, a zo lakaet da roue war Juda.

1. Hogen er seizved bloaz, Joiada oh en em galonekaad, a gemeras ar gantenerien, hag Azarias, mab Jeroham, hag Ismabel, mab Johana, hag Azarias, mab Abel, ha Maasias, mab Adaias, hag Elisafat, mab Zec'hri ; hag eñ a reas kevredigez ganto.

2. Hag hi a yeas war-dro da Juda, hag a strollas al Levited euz a oll gêriou Juda, ha priñsed tiadou Izarel, pere a zeuas da Jeruzalem.

3. An oll dud-se a reas eta kevredigez gand ar roue ; ha Joiada a lavaras dezo : Setu mab ar roue a dle reni, evel ma en-desus lavaret an Aotrou diwar-benn mibien David.

4. Hogen setu petra a dleit da ober :

5. An drede lodenn ahanoh, pere a zeu, dre bep sabbat, beleien ha Levited, ha porzerien, a vezo dirag an doriou : hag eun drede lodenn dirag ti ar roue ; hag an drede lodenn dirag an nor a halver dor an Diazez ; ar re all euz ar bobl a vezo e leur ti an Aotrou.

6. Den ebed n'ez ay e-barz ti an Aotrou nemed ar veleien hag al Levited a zo e karg ; ar re-ze hepken a yelo e-barz, o veza ma int santelet ; ar re all euz ar bobl a ziwallo ti an Aotrou.

7. Al Levited a vezo war-dro d'ar roue, ha pep hini e armou gantañ ; ha mar deu eur re bennag all e-barz an templ, ra vezo lazet ; bezent bepred gand ar roue, ha pa'z ay e-barz, ha pa'z ay er-mêz.

8. Al Levited ha Juda a reas eta kement en-doa gourhemennet Joiada, ar beleg-braz ; hag oll e kemerjont an dud a oa dindanno, ken ar re a zeue hervez reiz o sabbat, ken ar re o-doa greet o sabbat, hag a dlee mond kuit ; rag Joiada, ar beleg-braz, n'en-doa ket lezet da vond kuit ar bandennou a dlee mond beb sizun an eil goude eben.

9. Ha Joiada, ar beleg-braz, a roas d'ar gantenerien ar goafou, an tirennou hag ar skoejou a oa bet roet ha gouestlet gand David e ti an Aotrou.

10. Hag eñ a lakaas ar re oll euz ar bobl pere o-doa gourglezeier¹⁶⁴ dirag an aoter, adaleg an tu dehou, beteg an tu kleiz euz an templ, war-dro d'ar roue.

11. Hag i a zegasas mab ar roue, hag a lakaas ar gurunenn war e benn, hag an testeni ; i a lakaas ivez levr al lezenn en e zorn, hag hen disklêrias roue. Joiada, ar beleg-braz, hag e vibien, a eoulas anezañ ; hag i o veza pedet evitañ, a lavaras : Ra vevo ar Roue !

12. Pa glevas Atalia mouez ar bobl pehini a rede hag a veule ar roue, ez eas da gavoud ar bobl e templ an Aotrou.

13. Pa welas-hi, o vond e-barz, ar roue azezet war eun tron, ha priñsed ha soudarded war e dro, hag oll dud ar vro oh en em laouennaad, o kana, o korna, o c'hoari gand kalz binviou, e rogas he dillad, hag e lavaras : Trubarderez, trubarderez.

14. Hogen Joiada, ar beleg-braz, a zeuas er-mêz, a yeas etrezeg ar gantenerien ha priñsed an arme, hag a lavaras dezo : Tennit hi euz a greiz an templ, ha lazit hi er-mêz gand ar hleze. Hag ar beleg a hourhemennas na vije ket lazet e ti an Aotrou.

15. Hag i a lakaas o daouarn war he gouzoug, hag o veza he haset e-tal dor kezeg ar roue, e lazjont anezi eno.

16. Hogen Joiada a reas kevredigez etre eñ hg an oll bobl, hag ar roue, evid ma

¹⁶⁴ gourglezeier : tud gourglezeou ganto.

vije pobl an Aotrou.

17. Rag se an oll bobl a yeas e ti Baal, hag e ziskaras ; hag i a freuzas e aoteriou, hag e skeudennou ; laza a rejont ivez Matan, beleg Baal, dirag an aoter.

18. Joiada a lakaas ivez ofiseien e ti an Aotrou dindan dorn ar veleien hag al Levited, evel m'en-doa o rannet David e ti an Aotrou, evid ma vije kinniget sakrifisou-losk d'an Aotrou, evel ma eo skrivet e lezenn Moizez, gand levez ha kan, hervez reiz David.

19. Lakaad a reas ivez porzerien ouz doriou ti an Aotrou, evid n'az-aje e-barz hini ebed a gement a ve dihlan e neb doare.

20. Neuze e kemeras an gantenerien, hag an dud kaloneg, ha priñsed ar bobl, hag oll bobl ar vro, hag e lakajont ar roue da ziskenni euz a di an Aotrou, ha da vond dre greiz an nor uhella da di ar roue, hag e lakajont anezañ war dron ar roue.

21. Hag oll bobl ar vro en em laouennaas, hag ar gêr a oa e peoh, goude ma oe lazet Atalia gand ar hleze.

XXIV. Pennad.

Goude maro Joiada, Joas a zilez lezenn Doue.

1. Seiz vloaz en-doa Joas pa zeuas da reni ; hag eñ a renas daou-ugent vloaz e Jeruzalem . e vamm a oa anvet Sebia, euz a Versabee.

2. Hag eñ a reas ar pez a zo mad dirag an Aotrou e oll zeiziou Joiada, ar beleg-braz.

3. Joiada hel lakaas da gemeroud diou wreg, a bere en-doe mibien ha merhed.

4. Goude-ze Joas a lakaas en e benn aoza ti an Aotrou.

5. Hag eñ a zastumas ar veleien hag al Levited, hag a lavaras dezo : It dre gêriou Juda, ha dastumit e Izrael oll an arhant a zo red evid aoza beb bloaz templ ho Toue ; ha grit eñ raktal. Hogen al Levited a reas kement-se gand leziregez.

6. Hag ar roue a halvas Joiada ar beleg-braz, hag a lavaras dezañ : Perag n'eo ket bet fellet dit lakaad al Levited da zegas euz a Juda hag euz a Jeruzalem an arhant, en-doa lavaret Moizez, servijer anAotrou, a vije savet war an oll bobl evid tabenakl an testeni ?

7. Rag Atalia ar fallagr-braz hag he mibien o-doa gwastet ti an Aotrou ; hag i o-doa kinklet templ Baalin gand kement a oa bet gouestlet d'an Aotrou.

8. Ha diouz gourhemennou ar roue, i a reas eur hev, hag a lakaas anezañ ouz dor ti an Aotrou en diavêz.

9. Hag e oe embannet e Juda hag e Jeruzalem, ma tegasje pep hini d'an Aotrou ar gorp en-doa lakaet Moizez, servije Doue, war Izrael oll en distro.

10. Hag an oll briñsed, hag an oll bobl en em laouenas ; hag i a yeas e-barz hag a lakaas e kev an Aotrou, hag e taoljont kement ma oe leun.

11. Ha pa oa deuet an amzer da zegas ar hev dirag ar roue dre zaouarn al Levited (rag i a wele ez oa kalz a arhant), skrivagner ar roue a zeue, hag an hini en-doa dilennet ar beleg-braz ; hag i a denne er-mêz an arhant a oa er hev, hag a zegase ar hev d'e leh. Evel-se e reent bemdez, hag e tastumjont kalz a arhant.

12. Hag ar roue ha Joiada e roas d'ar re a oa e penn labouriou ti an Aotrou ; hag ar re-mañ a bae gantañ benerien vein, hag al labourerien all a aoze ti an Aotrou ; hag ivez ar hoved a reize an houarn hag an arem evid harpa ar pez a oa dare da goueza.

13. Hag ar re a labourer her gree gand ijin ; hag i a stankas ar faoutou hag an toullou a oa er mogerious, hag e lakajont ti an Aotrou en e stad kenta, hag e stardjont anezañ.

14. Ha p'o-doe peurhreet al labour, e tegasjont dirag ar roue ha dirag Joiada an arhant a oa chomet ; hag e oe greet ganto al listri a oa red evid servij an templ, hag evid ar sakrifisou-losk, hag ivez ar fiolennou, hag an oll listri aour hag arhant ; hag e oe kinniget heb ehan sakrifisou-losk e ti an Aotrou, keit ma vevas Joiaad.

15. Hogen Joiada a gosaas ; ha leun a zeziou e varvas d'an oad euz a zeg vloaz ha c'hweh-ugent.

16. Beziet e oe e kêr David gand ar roueed, o veza m'en-doa greet vad da Izrael ha d'e di.

17. Hogen goude ma oa maro Joiada, priñsed Juda a zeuas hag a stouas dirag ar roue ; hag eñ likaouet gand o doujañs, a zelaouas o goulennou.

18. Hag i a zilezas templ an Aotrou, Doue o zadou, hag a zervijas ar hoajou-sakr hag ar skeudennou ; hag ar vuanegez a gouezas war Juda ha war Jeruzalem en abeg d'ar pehed-se.

19. Ha Doue a gasas profeded dezo evid ma tistrojent ouz an Aotrou ; ha petra bennag ma testenient, ne fellas ket dezo o zelaoui.

20. Spered Doue a zeuas eta e Zac'harias, mab Joiada, ar beleg, hag eñ a zavas dirag ar bobl, hag a lavaras dezo : Evel-henn e lavar an Aotrou Doue : Perag hoh-eus-hu torret gourhemennou an Aotrou ? Ne dalvezo kement-se deoh ; ha perag hoh-eus-hu dilezet an Aotrou, evid m'ho tilezo ?

21. Ar re-mañ en em zastumas outañ, hag a labezas anezañ gand mein e leur ti an Aotrou, hervez gourhemennou ar roue.

22. Hag ar roue Joas n'en-doe ket a gown euz an drugarez en-doa bet Joiada, tad Zac'harias, en e geñver-eñ ; hogen eñ a lazas e vab-eñ ; hag hemañ pa oe dare da vervel, a lavaras : Ra welo an Aotrou, ha ra enklasko.

23. Hag a-benn eur bloaz, arme ar Siried a bignas en o eneb ; dond a reas e Juda hag e Jeruzalem, hag e lazas oll briñsed ar bobl ; hag i a gasas an oll breiz da roue Damas.

24. Hag evid gwir petra bennag ma oa bihan niver euz ar Siried a oa deuet, an Aotrou a lakaas etre o daouarn eul lod braz a dud, o veza m'o-doa ar re-mañ dilezet an Aotrou, Doue o zadou ; dismegañs a rejont ivez e-keñver Joas.

25. Hag i a yeas kuit, hag a lezas anezañ e doaniou braz ; e zervijerien o-unan a zavas en e eneb, evid veñji gwad mab Joiada, ar beleg-braz ; hag i a skoas gantañ war e wele, ken na oe maro. Beziet e oe e kêr David, hogen ne oe ket lakaet e bez ar roueed.

26. Hogen ar re a zavas en e eneb eo Zabad, mab Semmaat, an Ammonitez ; ha Jozabad, mab Semarit, ar Voabitez.

27. Hogen e-keñver e vibien, hag al lod braz a arhant a oa bet dastumet dindannañ, hag an aoz euz a di Doue, a zo skrivet gand aked e levr ar roueed. hag Amasias a renas en e leh.

XXV. Pennad.

Amasias a zo lazhet gand e dud e-unan.

1. Pemp bloaz warn-ugent en-doa Amasias pa zeuas da reni ; hag eñ a renas

nao bloaz warn-ugent e Jeruzalem ; e vamm a oa anvet Joadan, euz a Jeruzalem.

2. Ober a reas ar pezh a oa mad dirag an Aotrou ; hogen n'her greas ket a galon glok.

3. Ha pa welas e rouantelez startaet, e tagas ar zervijerien o-doa lazeta ar roue e dad.

4. Hogen ne lazeta ket o mibien, evel ma eo skrivet e levr lezenn Moizez, e pehini e hourhemenn an Aotrou, o lavaroud : Ne vezo ket lazeta an tadou evid ar vibien, nag ar vibien evid an tadou ; hogen pep hini a varvo evid e behed e-unan.

5. Amasias a strollas eta Juda, hag a rannas anezo dre diadou, dre vilenerien ha dre gantenerien, e oll Juda ha Benjamin ; hag eñ o niveras adaleg ugent vloaz hag ousspenn, hag a gavas tri-hant mil den yaouank dare d'ar brezel, hag a zouge ar goaf hag ar hleze.

6. Kas a reas ivez gantañ euz a Izrael kant mil den kaloneg-braz, evid kant talant arhant.

7. Hogen eun den Doue a zeuas d'e gavoud, hag a lavaras dezañ : O ! roue, n'az eet ket ganez arme Izrael, rag n'ema ket an Aotrou gand Izrael, na gand mibien Efraim kennebeud.

8. Ma kredez penaoz ema gounid ar brezel e nerz an arme, Doue az lakay da veza trehet gand da enebourien ; rag Doue eo o hennerz, pe o laka da dehi.

9. Hag Amasias a lavaras d'an den Doue : petra eta a zeuy ar hant talant emeus roet da vrezilidi Izrael ? Hag an den Doue a lavaras : An Aotrou en-deus peadra evid gelloud rei dit kalz muioh.

10. Evel-se Amasias a rannas an arme a oa deuet d'e gavoud euz a Efraim, evid ma tistroje d'he bro ; hogen i a zistroas d'o bro, ha droug braz enno ouz Juda.

11. Amasias, leun a fiziañs, a gasas e bobl, hag a yeas da draonienn ar Hoalennennou¹⁶⁵, hag eñ a drehas deg mil euz a vibien Seir.

12. Mibien Juda a gemeras ivez deg mil den, hag a gasas anezo war lein eur roh, hag i o zaolas diwar kreh d'an traoñ, hag ar re-mañ a oe brevet oll.

13. Hogen an arme en-doa kaset kuit Amasias evid n'az aje ket gantañ d'ar brezel, en em skignas dre gêriou Juda, adaleg Samari beteg Bethoron ; ha goude beza lazeta tri mil den, e skrapas eur preiz braz.

14. Hag Amasias goude beza trehet an Idumeed, ha beza kaset gantañ doueed mibien Seir, o lakaas da zoueed dezañ, a azeulas anezo, hag a zevas ezañs dirazo.

15. Rag se an Aotrou o veza savet droug ennañ ouz Amasias, a gasas eur profed etrezeg ennañ, evid lavaroud dezañ : Perag hoh-eus-hu azeulet doueed, pere n'o-deus ket tennet o fobl euz ho taouarn ?

16. Ha p'en-doe lavaret kement-se, Amasias a lavaras dezañ : Ha te eo kuzulier ar roue ? Tav, gand aon n'az lazfen. Hag ar profed o vond kuit : Me a oar, emezañ, penaoz e fell da Zoue rei ar maro dit, o veza ma eh-eus greet an droug-se, hag ousspenn n'eh-eus ket selaouet va ali.

17. Amasias, roue Juda, o veza eta kemeret eur gwall dezo, a gasas etrezeg Joas, mab Joac'haz, mab Jehu, roue Izrael, evid lavaroud dezañ : Deus, hag en em welom an eil egile.

18. Hogen Joas a gasas ar gannaded kuit, o lavaroud : An askol a zo el Liban a gasas eterzeg sedr al Liban, o lavaroud : Ro da verh da wreg d'am mab ; ha setu al loened a oa e koad Liban a dremenas, hag a flastras an askol.

19. Lavaret eh-eus : Trehet em-eus Edom, ha dre ze eo c'hwezeta da galon gand

¹⁶⁵ draonienn ar Hoalennennou : traonienn an holen.

ar stambouh : azez en da di, perag e tennez-te an droug warnout, evid da lakaad da goueza, te, ha Juda ganez ?

20. Amasias ne fellas ket dezañ e zelaoui, o veza ma oa falvezet gand an Aotrou e lakaad etre daouarn an enebourien, en abeg da zoueed Edom.

21. Joas, roue Izrael, a bignas eta ; Hag i en em welas an eil egile : Amasias, roue Juda, a oa e Betsamez-Juda.

22. Ha Juda a blegas dirag Izrael, hag a dehas dindan e deltou.

23. Hogen Joas, roue Izrael, a gemeras e Betsamez Amasias, roue Juda, mab Joas, mab Joac'haz, hag a gasas anezañ da Jeruzalem ; hag eñ a ziskaras he mur adaleg porz Efraim beteg porz ar Hogn, pevar-hant ilinad.

24. Kas a reas ivez da Zamari an oll aour hag an arhant, hag an oll listri a gavas e ti Doue, hag e ti bugale Obededom, hag e teñzoriou ti ar roue, hag ivez mibien ar re a oa e gouestl.

25. Amasias, mab Joas, roue Juda, a vevas pemzeg vloaz goude ma oa maro Joas, mab Joac'haz, roue Izrael.

26. Oberiou all Amasias, ken ar re genta, ken ar re ziweza, a zo skrivet e levr roueed Juda hag Izrael.

27. Goude ma oe eñ pellaet diouz an Aotrou, e oe aozet spiou outañ e Jeruzalem. Hag o veza ma tehas da Lac'hia, e eo kaset di, hag e oe lazet eno.

28. Hag i a zegasas anezañ war gezeg, hag a vezias anezañ gand e dadou e kêr David.

XXVI. Pennad.

Ozias a zev ezañs dirag an Aotrou, hag eñ a zeu da veza lovr.

1. Hogen oll bobl Juda a gemeras Ozias, pehini en-doa c'hwezeg vloaz, hag a lakaas anezañ da roue e leh Amasias, e dad.

2. Eñ eo a zavas Ailat, hag a lakaas anezi dindan galloud Juda, goude ma oe kousket ar roue Amasias gand e dadou.

3. C'hwezeg vloaz en-doa Ozias pa zeuas da reni hag eñ a renas daou vloaz hag hanter-kant e Jeruzalem. E vamm a oa anvet Jec'helia, euz a Jeruzalem.

4. Ober a reas kement a oa mad dirag an Aotrou, e kement m'en-doa greet Amasias, e dad.

5. Hag eñ a glaskas an Aotrou e deizioù Zac'harias, pehini en-doa ar skiant hag ar gwel euz a Zoue ; hag veza ma klaske an Aotrou, an Aotrou her reizas e pep tra.

6. Neuze ez eas, hag e stourmas a-eneb ar Filistined, hag e tiskarias muriou Get, ha muriou Jabnias, ha muriou Azot ; hag eñ a zavas kêriou-kreñv e Azot, hag e bro ar Fulistined.

7. Ha Doue e gennerzas a-eneb ar Filistined, hag a-eneb an Arabed, a chome a Guzbaal, hg a-eneb an Ammonited.

8. An Ammonited a zegase traou kaer da Ozias ; hag e ano a oa brudet-braz beteg en Ejipt, o veza ma'z oa bet meur a wech treh d'an enebourien.

9. Ozias a zavas ivez touriou e Jeruzalem war porz ar Hogn, ha war porz an Draonienn, ha re all en heveleb tu euz ar vur ; hag eñ o hreñvaas.

10. Sevel a reas ivez touriou en distro hag e kleuzas kalz a buñsou glao, o veza m'en-doa kalz a loened, ken er gompezen, ken en distro : bez' en-doa ivez

gwiniennou ha gwiniennerien war ar menezioù, hag er Harmel ; rag eun den e oa hag en em roe kaer d'ar hounedigez.

11. Arme e dud a vrezel a oa dindan dorn Jehiel, ar skrivagner, Maasias, an doktor¹⁶⁶, ha dindan dorn Hananias, a oa unan euz a zaged ar roue.

12. Hag oll niver priñsed kaloneg an tiadou a oa euz a zaou vil c'hweh-kant.

13. Hag an oll arme a oa didnanno, a oa euz a dri-hant mil seiz mil ha pemp-kant, pere a oa dare d'ar brezel, hag en em ganne evid ar roue a-eneb e enebourien.

14. Ozias a aozas evito, da lavaroud eo, evid an oll arme, tirennou, ha goafioù, ha tokou-houarn, hag hobregonou, ha gwaregou, ha batalmou evid teurel mein.

15. Hag eñ a reas e Jeruzalem ijinou a beb doare, a lakaas en tourioù, hag e kornioù ar murioù, evid tenna saezioù, ha mein braz : hag e ano a yeas pell, o veza ma oa kennerzet ha kreñvaet gand an Aotrou.

16. Hogen pa oe kreñvaet, e galon a zavas evid e goll ; rag eñ a zilezias an Aotrou, e Zoue ; hag o veza eet e templ an Aotrou, e fellas dezañ devi ezañs war aoter al louzou c'hwez-vad.

17. Hogen Azarias, ar beleg-braz, o veza eet raktal war e lerh, ha gantañ pevar-ugent beleg d'an Aotrou, tud kreñv-braz,

18. Eh enebjont ouz ar roue, hag e leverjont dezañ : N'eo ket dit, Ozias, da zevi ezañs d'an Aotrou, hogen d'ar veleien, da lavaroud eo, da vibien Aaron, a zo bet gouestlet d'ar garg-se : kee er-mêz euz ar santuar ha na zispriz ket on ali ; rag kement-se ne vezo ket niveret dit evid gloar gand an Aotrou Doue.

19. Neuze e savas droug en Ozias, pehini a zalhe en e zorn an ezañsouer, evid devi ezañs, hag e hourdrouzas ar veleien. Ha raktal e savas al lovrentez war e dal dirag ar veleien, e ti an Aotrou, e-tal aoter al louzou c'hwez-vad.

20. Ha pa zellas outañ Azarias ar beleg-braz, hag ar veleien all, e weljont al lovrentez war e dal, hag e lakajont anezañ er-mêz raktal. Hga eñ e-unan spontet-braz a hastas mond er-mêz o veza m'en-doa merzet penaoz en-doa skoet an Aotrou gantañ kerkent.

21. Ar roue Ozias a oe eta lovr beteg deiz e varo ; hag eñ a chomas en eun ti distro, goloet gand al lovrentez, en abeg da behini e oa bet kaset kuit euz a di an Aotrou. Hogen Jostam, e vab, a renas ti ar roue, hag a varne pobl ar vro.

22. Oberioù all Ozias, ken ar re genta, ken ar re ziweza, a zo bet skrivet gand Isaias, ar profed, mab Amos.

23. Hag Ozias a gouskas gand e dadou ; hag eñ a oe beziet e park beziou ar roueed, o veza ma oa lovr ; ha Joatam, e vab, a renas en e leh.

XXVII. Pennad.

Joatam a zouj an Aotrou.

1. Pemp bloaz warn-ugent en-doa Joatam pa zeuas da reni ; hag eñ a renas c'hwezeg vloaz e Jeruzalem ; e vamm an oa anvet Jerusa, merh Sadok.

2. Ober a reas ar pezh a oa reiz dirag an Aotrou, e kement a reas Ozias, e dad ; koulskoude n'ez eas ket e templ an Aotrou ; hag ar bobl hen¹⁶⁷ dileze bepred.

3. Eñ eo a zavas ar porz braz euz a di an Aotrou, hag a zavas kalz tiez war

¹⁶⁶ an doktor : an hini gouizieg (?)

¹⁶⁷ hen : an Aotrou.

vur Ofel.

4. Kêriou a zavas ivez e menezioù Juda, ha kestell ha touriou er hoajou.
5. Brezelekaad a reas ouz mibien Ammon, hag eñ a oe treh dezo ; hag i a roas dezañ en amzer-ze kant talant arhant, ha deg mil kor¹⁶⁸ gwiniz, ha kemend-all a heiz : kement-se a roas dezañ mibien Ammon en eil bloaz hag en trede.
6. Ha Joatam en em greñvaas, o veza m'en-doa reizet e heñchou dirag an Aotrou, e Zoue.
7. Oberiou all Joatam, hag e oll stourmou, hag e heñchou, a zo skrivet e levr roueed Izrael ha Juda.
8. Pemp bloaz warn-ugnet en-doa pa zeuas da reni, hag eñ a renas c'hwezeg e Jeruzalem.
9. Ha Joatam a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet e kêr David ; hag Ac'hiaz, e vab, a renas en e leh.

XXVIII. Pennad.

Fallagriez Ac'hab.

1. Ugent vloaz en-doa Ac'hab pa zeuas da reni ; hag eñ a renas c'hwezeg vloaz e Jeruzalem. Ne reas ket ar pez a oa reiz dirag an Aotrou, evel David e dad.`
2. Hogen eñ a gerzas e heñchou roueed Izrael : hag ouspenn e teuzas skeudennou da Vaalim.
3. Eñ a zevas ezañs e traonienn Benennom, hag a lakaas e vibien da dreuzi an tan, hervez kiz ar broadou en-doa kaset da get an Aotrou, pa zeuas mibien Izrael.
4. Sakrifisou a ree ivez, hag e teve louzou c'hwez-vad war al lehiou uhel, war an torgennou, ha dindan an oll wez delienneg.
5. Hag an Aotrou, e Zoue, hel lakaas etre daouarn roue Siria, pehini a drehas anezañ, hag a gemeras eur preiz braz en e rouantelez, a gasas gantañ da Zamas. Lakaet e oe ivez etra daouarn roue Izrael, pehini a skoas warnezañ gand eur gouli braz.
6. Rag Fasee, mab Romelia, a lazas en eun deiz c'hweh-ugent mil euz a Juda, oll tud a-vrezel ; en abeg m'o-doa dilezet an Aotrou, Doue o zadou.
7. En heveleb amzer Zec'hrin den galloudeg euz a Efraim, a lazas Maasias, mab ar roue, hag Ezrika dug e di, hag Elkana, an eil goude ar roue.
8. Ha bugale Izrael a gemeras war o bredeur daou-hant mil, ken gwragez, ken paotred, ken plahed ; hag eur preiz braz, a gasjont da Zamari.
9. Bez' e oa neuze eur profed d'an Aotrou, anvet Oded, pehini, o veza eet e diarbenn an arme a zeue da Zamari, a lavaras dezo : Setu an Aotrou, Doue ho tadou, o veza savet droug ennañ ouz Juda, en-deus o lakaet etre ho taouarn ; ha c'hwi hoh-eus o lazet gand krizder, en heveleb doare ma eo pignet ho trougiez beteg an neñv.
10. Ouspenn e fell deoh lakaad da sklaved ha da sklavezed deoh mibien¹⁶⁹ Juda ha Jeruzalem ; ar pez ha na dleit ket da ober, rag e kement-se hoh-eus pehet a-eneb an Aotrou, ho Toue.
11. Hogen selaouit va ali, ha kasit kuit ar re euz ho predeur hoh-eus degaset

¹⁶⁸ kor : eur muzul (?)

¹⁶⁹ mibien : bugale.

da sklaved ; rag dare eo froudenn an Aotrou da goueza warnoh.

12. Evel-se lod euz a briñsed mibien Efraim, Azarias, mab Johanan, Barac'hias, mab Mosollamot, Ezsec'hias, mab Sillum, hag Amasa, mab Adali, en em lakaas e-raog ar re a zeue euz an emgann.

13. Hag a lavaras dezo : Na zegasit ket ar sklaved-se amañ, gand aon na behjem a-eneb an Aotrou. Perag e fell deoh lakaad pehejou all war ar re on-eus greet, ha leunia or gwallou koz ? Rag braz eo or pehed, ha buanegez an Aotrou a zo dare da goueza war Izrael.

14. Hag ar vrezelidi a gasas kuit ar preiz, ha kement o-doa kemeret, dirag ar briñsed hag an oll dud.

15. Hag an dud a bere on-eus komzet kent, a chomas en o zav ; hag i a gemeras ar sklaved, hag ar re oll a oa en noaz, hag o gwiskas gand an diwisk ; ha goude m'o-doa o gwisket, hag o arhennet, ha roet da zebri ha da eva dezo, hag o eouliet evid o diskuiza, ha roet pep preder dezo, e lakajont war kezeg kement hini ha na helle ket kerzoud, hag a oa dinerz e gorv ; hag e kasjont anezo da Jeriko, kêr ar palmezed, etrezeg o breudeur ; hag i a zistroas da Zamari.

16. En amzer-ze ar roue Ac'haz a gasas tud etrezeg roue an Asiried, evid goulenn kennerz.

17. An Idumeed a zeuas hag a lazas kalz a dud euz a Juda, hag a gasas ganto eur eur preiz braz .

18. Ar Filistined en em skignas ivez dre gêriou ar gompezenn, ha diouz ar hreisteiz euz a Juda ; hag i a gemeras Betsamez, hag Aialon, ha Gaderot, ha Soc'ho, ha Tamnon, ha Gamzo, gand o bourhiou, hag e chomjont enno.

19. Rag an Aotrou en-doa izelaet Juda, en abeg da Ac'haz, roue Juda, o veza m'en-doa e lezet noaz ha digennerz, ha m'en-doa disprizet an Aotrou.

20. Degas a reas ivez outañ Telgat-Falnasar, roue an Asiried, pehini a hloazas anezañ, hag a wastas ar vro heb harz ebed.

21. Ac'haz eta a gemeras kement a oa e ti an Aotrou, hg e ti ar roue, hag e ti ar briñsed, hag a reas roou da roue an Asiried ; ha koulskoude ne reas ket e hounid gand kement-se.

22. Hogen ouspenn ar roue Ac'haz, e amzer e anken, a greskas c'hoaz e zsipriz ouz an Aotrou ;

23. Rag anezañ e-unan e lazas viktimou da zoueed Damas, a heskine anezañ, war e veno, hag e lavaras : Doueed roueed Siria eo a gennerz anezo ; me a habaskay anezo gand va ostivou, hag i en em lakay a-unan ganen ; hag i en eneb a oe da abeg d'e goll, ha da hini Izrael oll.

24. Ac'hab eta o veza kemeret oll listri ti Doue, hag o veza o zorret, a zerras doriou templ Doue, hag a zavas aoteriou evitañ e oll gorniou Jeruzalem.

25. E oll gêriou Juda e savas ivez aoteriou evid devi ezañs : hag evel-se e tennas warnezañ buanegez an Aotrou, Doue e dadou.

26. E oberiou all, hag e oll heñchou, ken ar re genta, ken ar re ziweza, a zo skrivet e levr roueed Juda, hag Izrael.

27. Hag Ac'haz a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet e kêr Jeruzalem ; hogen ne oe ket lakaet e beziou roueed Izrael. Hag Ezech'hias, e vab, a renas en e leh.

XXIX. Pennad.

Ezec'hias a laka keheledigez Doue er stad kenta.

1. Pemp bloaz warn-ugent en-doa Ezech'hias pa zeuas da reni ; hag eñ a renas nao bloaz warn-ugent e Jeruzalem ; e vamm a oa anvet Abia, merh Zac'harias.
2. Hag eñ a reas ar pezh a oa hetuz dirag an Aotrou, e kement m'en-doa greet David e dad.
3. Er bloaz kenta hag er miz kenta euz e ren, e tigoras perzier ti an Aotrou, hag e reizas anezo.
4. Lakaad a reas ivez da zond ar veleien hag al Levited, hag e strollas anezo war leurgêr ar sav-heol.
5. Hag e lavaras dezo : Selaouit ahanon, Levited, hag en em zantelit ; karzit ti an Aotrou, Doue ho tadou, ha taolit an oll draou louz er-mêz euz ar santuar.
6. On tadou o-deus pehet hag o-deus greet an droug dirag an Aotrou on Doue, oh e zilezel : distroet o-deus o daoulagad diwar tabernakl an Aotrou, hag o-deus troet o heiun dezañ.
7. Serret o-deus doriou ar palier, ha mouget o-deus ar hleuzeuriou ; n'o-deus mui devet a ezañs, n'o-deus miui kinniget sakrifisou-losk e santuar Doue Izrael.
8. Rag se froudou an Aotrou a zo savet ouz Juda hag ouz Jeruzalem ; hag eñ en-deus o roet d'ar heflusk, ha d'ar maro, ha d'ar goap, evel m'her gwelit gand ho taoulagad.
9. Evel-se eo bet lazet on tadou gand ar hleze ; hag or mibien, hag or merhed, hag or gwraez a zo bet kaset e sklaverez, en abeg d'an droug-se.
10. Bremañ eta, war va mennoz, e tleom nevezi kevredigez gand an Aotrou, Doue Izrael ; hag eñ a zistroy froudenn e vuanegez diwarnom.
11. Va mibien, na vezit ket lezireg : ho tilennet en-deus an Aotrou evid ma savot dirazañ, ha ma servijot anezañ, ha ma kehelot anezañ, ha ma tevote ezañs dirazañ.
12. Neuze e savas al Levited, Mahat, mab Amasai, ha Joel, mab Azarias, euz a vibien Kaat ; hag euz a vibien Merari, Kis, mab Abdi, hag Azarias, mab Jataleel ; hag euz a vibien Gersom, Joah, mab Zemman, hag Eden, mab Joab :
13. Hag euz a vibien Elisafan, Samri, ha Jahiel ; hag euz a vibien Asaf, Zac'harias, ha Matamias :
14. Hag euz a vibien Heman, Jahiel, ha Semei ; hag euz a vibien Iditun, Semeias, hag Oziel ;
15. Hga i a strollas o breudeur, hag o veza en em zantellaet, ez ejont e-barz an templ, hervez urz ar roue, ha gourhemenn an Aotrou, evid karza ti Doue.
16. Ar veleien a yeas ivez e-barz templ an Aotrou evid e zantela : hag i a dennas ar pezh a oa dihlan en diabarz, hag e gasas e palier ti an Aotrou ; hag al Levited e gemeras hag e zougas er-mêz beteg froud Sedron.
17. Hogen ar henta deiz euz ar henta miz e teraoujont da garza ; hag en eizved deiz euz an heveleb miz ez ejont e palier templ an Aotrou, hag e karzjont an templ a-hed eiz devez ; hag er c'hwezegved deiz euz an heveleb miz e peurhrejont ar pezh o-doa deraouet.
18. Neuze ez ejont da gavoud ar roue Ezech'hias, hag e leverjont dezañ : Santellaet on-eus oll di an Aotrou hag aoter ar sakrifisou-losk, hag he listri, ha taol ar baraou kinnig, hag he listri,
19. Hag oll arrebeuri an templ en-doa saotret ar roue Ac'hab e-pad e ren, goude m'en-doe dilezet Doue : ha setu int lakaet oll dirag aoter an Aotrou.
20. Hag ar roue Ezech'hias o sevel diouz ar mintin, a strollas oll briñsed kêr,

hag a bignas da di an Aotrou.

21. Hag i a ginnigas kevred seiz taro, ha seiz tourh, ha seiz oan, ha seiz bouh, evid ar pehed, evid ar rouantelez, evid ar santuar, hag evid Juda ; hag eñ a lavaras d'ar veleien, mibien Aaron, kinniga anezo war aoter an Aotrou.

22. Ar veleien a lazaz eta an tirvi, hag a gemeras ar gwad, hag a skuillas anezañ war an aoter ; laza a rejont ivez an tourhed, hag e skuilljont o gwad war an aoter ; laza a rejont ivez an oen, hag e skuilljont o gwad war an aoter.

23. Hga i a zegasas ar bouhed a oa evid ar pehed, dirag ar roue ha dirag an dud oll, hag e lakajont o daouarn warnezo.

24. Hag ar veleien a lazaz anezo ; hag a skuillas o gwad dirag an aoter evid dasprena pehejou Izrael oll : rag ar roue en-doa gourhemennet kinniga ar sakrifis-losk evid Izrael oll hag evid ar pehed.

25. Hag eñ a lakaas Levited e ti an Aotrou gand simbalou, ha lirennou, ha telennou, hervez reiz ar roue David, ha Gad, ar gweler, ha Natan, ar profed : rag gourhemenn an Aotrou e oa, dre henou e brofeded.

26. Al Levited a zavas eta gand binviou David, hag ar veleien gand kornou-boud.

27. Hag Ezech'ias a hourmennas ma vije kinniget ar sakrifisou-losk war an aoter ; ha pa ginniget ar sakrifisou-losk, en em lakajont da gana meuleudiou an Aotrou, da zeni gand ar hornou-boud, ha da hoari gand an oll vinviou a oa bet aozet gand David, roue Izrael.

28. Endra ma edo an oll bobl oh azeuli, ar ganerien, hag ar re a zone gand ar hornou-boud, a reas o harg, ken na oe peurhreet ar sakrifis-losk.

29. Ha pa oe peurhreet ar hinnig, e stouas ar roue, hag ar re oll a oa gantañ, hag eh azeuljont.

30. Ezech'ias hag ar briñsed a hourhemennas d'al Levited ma veuljent an Aotrou gand geriou David, hag Asaf, ar gweler ; hag i a veulas anezañ gand eul levenez vraz ; hag o plega o glin, eh azeuljont.

31. Hag Ezech'ias a lavaras c'hoaz : Leuniet eo ganeoh ho taouarn evid an Aotrou ; tostait, ha kinniget viktimou ha meuleudiou e ti an Aotrou. An oll dud-se eta a ginnigas ostivou, ha meuleudiou, ha sakrifisou-losk, gand eur spered leun a zoujañs Doue.

32. Hogen setu an niver euz ar sakrifisou-losk a oe kinniget gand al lod tud-se : deg taro ha tri-ugent, kant tourh, ha daou-hant oan.

33. Santela a rejont ivez evid an Aotrou c'hweh-kant ejenn, ha tri mil dañvad.

34. Hogen nebeud a veleien a oa, ha ne oa ket a-walh anezo evid diskrohenna ar viktimou ; rag se al Levited, o breudeur, o hennerzas, ken na oe peurhreet al labour ha na oe sakret beleien : rag êsoh eo sakra Levited, eged sakra beleien.

35. Evel-se e oe kinniget kalz sakrifisou-losk, lard ostivou a beoh, ha braoued kinnig an ostivou ; ha kehelidigez ti an Aotrou a oe peurhreet.

36. Hag Ezech'ias en em laouennaas, hag ivez an oll bobl, o veza ma oa peurhreet servij ti an Aotrou : rag an dezo da ober kement-se a oe kemeret raktal.

XXX. Pennad.

Ezech'ias a halv Izrael oll ha Juda da Jeruzalem evid lida ar Pask.

1. Ezech'ias a gasas ivez etrezeg Izrael oll ha Juda, hag e skrivas liziri da

Efraim

ha da Vanase, evid ma teujent da di an Aotrou e Jeruzalem, evid ober ar Pask d'an Aotrou, Doue Izrael.

2. Hag ar roue en e guzul, hag ar briñsed, hag an oll bobl a oa dastumet e Jeruzalem, a lavaraz penaoz e vije greet ar Pask en eil miz.

3. Rag n'o-doa ket gelllet e ober en e amzer, o veza ne oa ket sakret c'hoaz a-walh a veleien, ha ne oa ket strollet c'hoaz ar bobl e Jeruzalem.

4. Hag al lavar-ze a blije d'ar roue, ha dae'n dud oll.

5. Hag i a hourhemennas e vije kaset kannaded dre Izrael oll, euz a Versabee beteg Dan, evid ma teujent, hag e rajent ar Pask d'an Aotrou, Doue Izrael e Jeruzalem : rag kalz anezo n'o-doa ket e hreet evel ma eo skrivet el lezenn.

6. Ar rederien a yeas eta gand liziri ar roue hag ar briñsed, dre oll Izrael ha Juda, beteg al leh ma oa bet lavaret dezo mond gand ar roue, hag ez embannjont : Bugale Izrael, distroit etrezeg an Aotrou, Doue Abraham, hag Izaak, hag Izrael ; hag eñ a zistroy etrezeg ar re a zo tehet diouz dorn roue an Asiried.

7. Na vezit ket evel ho tadou hag ho preudeur, pere o-deus dilezet an Aotrou, Doue o zadou, pehini en-deus o lakaet da vervel, evel ma her gwelit.

8. Na gredit ket ho pennou, evel ho tadou : roit ho torn d'an Aotrou, ha deuit d'e zantuar, en-deus santelet da viken : servijit an Aotrou, Doue ho tadou, hag eñ a zistroy froudenn e vuanegez diwarnoh.

9. Rag mar distroit ouz an Aotrou, ho preudeur hag ho mibien a gavo trugarez e-keñver o mistri pere o-deus o haset e sklaverez, hag i a zistroy d'ar vro-mañ : rag an Aotrou, ho Toue, a zo mad ha trugarezuz, ha ne zistroy e zaoulagad diwarnoh, mar distroit outañ.

10. Ar rederien a gerze buan euz an eil kêr d'eben, dre vro Efraim ha Manase, beteg Zabulon ; hogen i a hoarze hag a ree goab anezo.

11. Hogen tud euz a Aser, euz a Vanase, hag euz a Zabulon, a heulias an ali, hag a zeuas da Jeruzalem.

12. Hogen dorn an Aotrou en em astennas war bugale Juda, hag i n'o-doe nemed eur galon, evid ober lavar an Aotrou, hervez gourhemenn ar roue hag ar briñsed.

13. Kalz a bobl en em strollas e Jeruzalem, evid lida gouel ar bara dihoell, en eil miz ;

14. Hag i a zavas hag a ziskaras an aoteriou a oa e Jeruzalem, hag a freuzas ar re oll war pere e teved ezañs d'an idolou, hag o zaolas e froud Sedron.

15. Laza a rejont eta ar Pask er pevarzegved deiz euz an eil miz, ar veleien hag al Levited o veza neuze en em zantellaet, a ginnigas sakrifisou-losk e ti an Aotrou.

16. Hag i a zavas en o reiz, hervez gourhemenn ha lezenn Moizez, an den Doue ; hag ar veleien a gemere euz a zaouarn al Levited ar gwad a dlee beza skuillet.

17. O veza ma oa c'hoaz kalz euz ar bobl ha ne oa ket en em zantellaet : ha dre ze al Levited a lazaz ar Pask¹⁷⁰ evid ar re n'o-doa ket hastet en em zantella d'an Aotrou.

18. Eul lod braz euz a bobl Efraim, ha Manase, hag Isakar, ha Zabulon, pere ne oant ket bet santellaet, a zebras ar Pask, ha nann evel ma oa skrivet¹⁷¹. Hag Ezech'hias a bedas evito, o lavaroud : Mad eo an Aotrou, hag eñ a ray trugarez.

19. D'ar re oll pere a glask a wir galon an Aotrou, Doue o zadou : ha n'o

¹⁷⁰ a lazaz ar Pask : a lazaz viktimou ar Pask.

¹⁷¹ nann evel ma oa skrivet : n'o-doa ket debret ar Pask evel ma oa bet skrivet hen ober.

zamallo ket, evito da veza santelet nebeutoh.

20. An Aotrou a zelaouas ouz Ezech'hias, hag en-doe trugarez ouz ar bobl.

21. Evel-se ar re euz a vugale Izrael pere en em gavas e Jeruzalem, a reas gouel ar bara dihoell e-pad seiz devez gand eul levenez vraz, o veuli bemdez an Aotrou ; hag al Levited hag ar veleien gand ar binviou a zeere ouz o harg.

22. Hag Ezech'hias a gomzas ouz kalon an oll Levited pere a heulie ervad lid an Aotrou : hag i a zebras e-pad seiz devez euz ar gouel, hag a lazas viktimou a beoh, hag a veulas an Aotrou, Doue o zadou.

23. An oll bobl a gavas mad lida c'hoaz seiz devez all ; hag i her greas gand eul levenez vraz.

24. Hag Ezech'hias, roue Juda, en-doa roet d'ar bobl mil taro, ha seiz mil dañvad ; hag ar briñsed o-doa roet d'ar bobl mil taro, ha deg mil dañvad : eul lod braz eta a veleien en em zantellaas.

25. Hag oll bobl Juda a oe leun a levenez, ken ar veleien hag al Levited, ken al lod braz a dud a oa deuet euz a Izrael ; hag ivez an diavêzidi euz a vro Izrael, hag ar re a chome e Juda.

26. Hag eul lid braz a oe greet e Jeruzalem, evel na oa ket bet greet er gêr-ze abaoe deziou Salomon, mab David, roue Izrael.

27. Hogen ar veleien hag al Levited a zavas hag a vennigas ar bobl ; hag o mouez a oe klevet : hag o fedenn a yeas beteg santuar an neñv.

XXXI. Pennad.

Pobl Izrael a ziskar an idolou.

Reiz karg ar veleien hag al Levited.

1. Goude ma oe greet an oll lidou-ze, an oll bobl a Izrael pehini en em gavas e kêriou Juda, a zeuas er-mêz, a vrevas an idolou, a ziskaras ar hoajou-sakr, a freuzas al lehiou uhel, a lakaas penn evid penn an aoteriou, ken e oll Juda ha Benjamin, ken e Efraim ha Manase, ken na oe ganto kaset oll da get. Hag oll vugale Izrael a zistroas pep hini d'e dra ha d'e gêr.

2. Hogen Ezech'hias a zavas bandennou beleien ha Levited hervez o rannou, pep hini en e garg, ken ar veleien, ken al Levited, evid ar sakrifisou-losk, hag ar sakrifisou a beoh ; evid ma servijent ha ma veuljent Doue, ha ma kanjent ouz perzier kamp an Aotrou.

3. Hogen lod ar roue a oa kinniga diwar e zanvez ar sakrifisou-losk diouz ar mintin ha diouz ar pardaez, hag ivez d'an deziou sabbat, ha d'an deziou kenta euz ar miz, ha d'an oll lidou, evel ma eo skrivet e lezenn Moizez.

4. Eñ a hourhemennas ivez d'ar bobl a chome e Jeruzalem, rei o lodou d'ar veleien ha d'al Levited, evid ma helljent en em rei da lezenn an Aotrou.

5. Pa oe deuet kement-se da ziskouarn ar bobl, bugale Izrael a ginnigas dezo kalz a brimediou a ed, a win, hag a eoul, hag ivez a vel : rei a rejont ivez an deog euz a gement a zoug an douar.

6. Bugale Izrael ha Juda pere a chome e kêriou Juda, a ginnigas na deog euz an ejenned hag euz an deñved, hag an deog euz an traou santellaet a oa bet gouestlet d'an Aotrou, o Doue ; hag o tougen kement-se, e rejont kalz berniou anezo.

7. En trede miz e teraoujont sevel ar berniou-ze, hag er zeived miz e

peurzavjont anezo.

8. Ha pa oa eet e-barz Ezeq'hias hag ar briñsed, ha pa weljont ar berniou, e vennigjont an Aotrou ha pobl Izrael.

9. Hag Ezeq'hias a houlenas ouz ar veleien hag ouz al Levited, perag o-doa savet evel-se ar berniou-ze.

10. Azarias, ar beleg braz, euz a ouenn Sadok, a lavaras dezañ : Abaoe ma eo bet deraoet kinniga ar henta frouez e ti an Aotrou, on-eus debret anezo, hag on-eus bet a-walh ; hag eo chomet kalz, o veza ma en-deus an Aotrou benniget e bobl : hag an dilerh eo al lod braz-se a welez.

11. Hag Ezeq'hias a hourhemennas ma vije greet solierou e ti an Aotrou. Ha pa oent greet,

12. E kasjont enno an oll breveudiou, hag an deogou a oa bet gouestlet. Hogen lakaet e oe da rener warnezo Konenias al Levit, ha Semei e vreur, hag e eil ;

13. Ha war-lerh hemañ Jahiel, hag Azarias ha Nabat, hag Asael, ha Jerimot, ha Jozabad, hag Eliel, ha Jesmac'hias, ha Mahat, ha Banaias, dindan beli Keneias ha Semei, e vreur, dre hourhemenn Ezechias ar roue, hag Azarias, beleg-braz ti Doue, euz a bere e talhe pep tra.

14. Hogen Kore, mab Jemaa, al Levit, porzier dor ar sav-heol, a oa da benn war ar pez a ginniget a-youl d'an Aotrou, ha war ar previdiou, ha war an traou a ouestled d'ar santuar.

15. Ha dindannañ edo Eden, ha Benjamin, ha Jesue, ha Semeias, hag Amarias, ha Sec'henias, e kêriou ar veleien, evid ma rojent gand reiz o lod d'o breudeur, kenkoulz d'ar re vihan ha d'ar re vraz.

16. Heb niveri ar baotred adaleg an oad a dri bloaz hag ouspenn, ha kement hini a yee e templ an Aotrou, hag a ree o harg e pep devez, hervez ar rann a oa greet anezo ;

17. Hag ivez ar veleien diouz o ziadou, hag al Levited adaleg ugent vloaz hag ouspenn, hervez o reiziou hag o bandennou ;

18. Kemeroud a reed ivez gand fealded euz ar pez a oa bet gouestlet, evid rei da voued d'ar bobl, ken d'ar gwraez, ken d'o mibien, paotred pe merhed.

19. Bez' e oa ivez tud euz a vibien Aaron er mêziou, hag e fabourziou an oll gêriou, pere a roe o lodou da oll baotred ar veleien hag al Levited.

20. Ezeq'hias a reas eta kement ha ma on-eus lavaret e Juda oll : hag eñ a reas ar pez a oa mad, ha reiz, ha gwir dirag an Aotrou, e Zoue,

21. E kement a zelle ouz servij ti an Aotrou, hervez al lezenn hag al lidou, o klask Doue a-griez e galon : e ober a reas, hag e teus a-benn a bep tra.

XXXII. Pennad.

Sennacherib a gerz a-eneb Jeruzalem.

Eun êl a dreh e arme.

1. Goude ma oe sevenet an traou-ze gand fealded, Sennacherib, roue an Aisried, a zeuas e bro Juda, hag a hronnas ar hêriou-kreñv evid o hemeroud.

2. Pa welas Ezeq'hias penaoz e tostae Sennacherib, hag e troe froudenn ar brezel ouz Jeruzalem,

3. En em guzurias gand ar briñsed, hag an dud a vrezel, evid gouzoud ha mad oa stanka mammennou ar feunteuniou a oa er-mêz euz a gêr : hag ar huzul-ze o

veza bet kavet mad gand an oll,

4. Ezec’hias a strollas kalz a dud, pere a stankas an oll feunteuniou, hag ar ster a rede dre greiz ar vro, o lavaroud : Evit, mar deu roueed an Asiried, ne gavint ket kalz a zour.

5. Eñ a zavas¹⁷² ivez gand kalz a breder ar vur oll a oa freuzet. Sevel a reas ivez touriou warnezi, hag eur vur all en diavêz. Aoza a reas c’hoaz Mello e kêr David ; hag ober a reas armou a beb doare ha tirennou.

6. Lakaad a reas priñsed war an dud a-vrezel, hag o veza o strollet oll war gwiler porz kêr, e komzas ouz o halon, o lavaroud :

7. Bezit tud kaloneg ha posteg ; n’ho-pezet ket a aon ha na spontit ket dirag roue an Asiried, hag ar re oll a zo gantañ : rag muioh a zo c’hoaz ganeom eged gantañ.

8. Rag eur vreh kig n’eus ken gantañ, ha ganeom ema an Aotrou, on Doue, pehini a gennerz ahanom, hag a stourm evidom : hag ar bobl a oe kalonekaet gand ar geriou-ze euz a Ezec’hias, roue Juda.

9. Goude-ze Sennacherib, roue an Asiried, (pehini a stourme ouz Lac’his gand e oll arme), a gasas lod euz e zervijerien da Jeruzalem etrezeg Ezec’hias, roue Juda, hag etrezeg an oll bobl a oa e kêr, o lavaroud :

10. Evel-henn e lavar Sennacherib, roue an Asiried : E piou e hellit-hu fizioud evid chom en ehan, ha c’hwî gronnet e Jeruzalem ?

11. Ha n’en-deus ket Ezec’hias ho touellet evid ho lakaad da vervel gand an naon ha gand ar sehed, pa en-deus lavaret deoh evel gwir penaoz e teuje an Aotrou, ho Toue, d’ho tenna euz a zaouarn roue an Asiried ?

12. Ha pa n’eo ket an Ezec’hias-se pehini en-deus diskaret e lehiou uhel hag e aoteriou, ha pehini en-deus gourhemennet da Juda ha da Jeruzalem, o lavaroud : Na azeulot nemed ouz eun aoter, ha na vezot ezañs nemed dirazi.

13. Ha ne ouzoh-hu ket petra em-eus greet, me ha va zadou, da oll boblou an douar ? Doueed ar broadou hag an douar oll, hag i a zo bet kreñv a-walh evid o zenna euz va daouarn ?

14. Pehini euz a oll zoueed ar broadou, pere a zo bet gwastet gand va zadou, en-deus eñ gellet tenna e bobl euz va daouarn, evid ma hellfe ivez ho Toue ho tenna euz va daouarn ?

15. Na douellet ket eta Ezec’hias ahanoh, ha na reet ket goap ahanoh, ha na gredit ket dezañ. Rag ma n’en-deus gellet hini euz a zoueed ar broadou hag ar rouanteleziou tenna e bobl euz va daouarn, hag euz a zaouarn va zadou, dre ze ne hello ket ho Toue ho tenna euz va daouarn.

16. Servijerien Sennacherib a lavaras c’hoaz kalz traou a-eneb an Aotrou Doue, hag a-eneb Ezec’hias e zervijer.

17. Skriva a reas ivez liziri leun a zrougprezegou a-eneb an Aotrou, Doue Izrael, hag eñ a gomzas en e eneb : Evel n’o-deus ket gellet doueed ar broadou all tenna o fobl euz va dorn, evel-se Doue Ezec’hiel ne hello ket tenna e bobl euz va dorn.

18. Ouspenn, o sevel kalz e vouez, e komzas e yez ar Iuzevien ouz ar bobl a oa war muriou Jeruzalem, evid o¹⁷³ sponta ha kemeroud kêr.

19. Hag eñ a gomzas a-eneb Doue Jeruzalem, evel m’en-doa greet a-eneb doueed poblou an douar, labour daouarn an dud¹⁷⁴.

¹⁷² Eñ a zavas : a zavas en-dro....

¹⁷³ o : tud ar bobl.

¹⁷⁴ labour daouarn an dud : doueed bet krouet gand labour an dud.

20. Hogen ar roue Ezeq'hias, hag ar profed Isaias, mab Amos, a bedas a-eneb ar gwall brezegou-ze, hag a harmas beteg an neñv.

21. Hag an Aotrou a gasas eun êl, pehini a lazas kement den kreñv ha kaloneg a oa e arme roue an Asiried, hag ivez ar priñs anezo. hag eñ a zsitroas d'e vro leun a vez. Ha pa oa eet e-barz ti e zoue, ar vibien a oa deuet er-mêz euz e zargreiz, a lazas anezañ gand ar hleze.

22. Evel-se an Aotrou a dennas Ezeq'hias hag ar re a chome e Jeruzalem euz a zaouarn Sennacherib, roue an Asiried, hag euz a zaouarn ar re all oll, hag e roas ar peoh dezo tro-war-dro.

23. Kalz zoken a zegase ostivou da Jeruzalem evid ober sakrifisou d'an Aotrou, ha roou da Ezeq'hias, roue Juda, pehini a oe meulet-braz goude-ze e-touez an oll vroadou.

24. En deiziou-ze e klañvas Ezeq'hias beteg ar maro ; hag eñ a bedas an Aotrou, pehini a glevas anezañ, hag a roas eun arouez dezañ.

25. Hogen ne zistaolas ket da Zoue ar madou en-doa bet digantañ, rag e galon a stambouhas ; ha buanegez an Aotrou a zavas en e eneb, hag ouz Juda ha Jeruzalem.

26. Hogen goude-ze en em izellaas, eñ hag oll dud Jeruzalem, o veza ma oa bet stambouhet e galon ; ha rag se ne zeuas ket warnezo buanegez an Aotrou e deiziou Ezeq'hias.

27. Hogen Ezeq'hias a oe pinvidig ha brudet-braz : dastumi a reas kalz teñzoriou arhant, hag aour, ha mein talvouduz, ha louzou c'hwez-vad, hag armou a beb doare, ha listri kaer-meurbed.

28. Bez' en-doa ivez solierou ed¹⁷⁵, ha gwin, hag eoul, ha marchosiou evid ar hezeg, ha krevier evid ar zaout.

29. Hag eñ a zavas kêriou evitañ ; rag deñved ha saout en-doa en eun niver braz-meurbed, o veza m'en-doa an Aotrou roet kalz a vadou dezañ.

30. An Ezeq'hias-se eo a stankas ar feunteun uhel euz a zoureier Gibon, hag a lakaas anezo da redeg dindan an douar etrezeg ar huz-heol euz a gêr David : dond a reas a-benn euz a gement a fellas dezañ da ober.

31. Koulskoude en amzer ma oe kaset ptiñsed Babilon da gannaded etrezeg ennañ, evid ober goulennou digantañ diwar-benn ar burzud a oa bet c'hoarvezet er vro, Doue hen dilezas evid e arnodi, ha rei da anaoud kement a oa en e galon.

32. Oberiou all Ezeq'hias, hag e vadoberiou, a zo skrivet e gweledigez Isaias profed, mab Amos, hag e levr roueed Juda hag Izrael.

33. Hag Ezeq'hias a gouskas gand e dadou ; hag e oe beziet en uhella euz a veziou mibien David. Ha Juda oll, hag oll dud Jeruzalem a reas kañv dezañ ; ha Manasez, e vab, a renas en e leh.

XXXIII. Pennad.

Sklaverez ha pinijenn Manasez.

1. Daouzeg vloaz en-doa Manasez pa zeuas da reni, ha pemp bloaz hag hanter-kant e renas e Jeruzalem.

2. Hogen eñ a reas an droug dirag an Aotrou, hervez fallagriezou ar broadou

¹⁷⁵ solierou ed : solieradou ed.

en-doa dispennet an Aotrou dirag bugale Izrael.

3. Hag eñ a zavas adarre al lehiou uhel a oa bet diskaret gand e dad Ezec'hias. Sevel a reas aoteriou da Vaalim, ober a reas koajou-sakr, hag eh azeulas oll arme an neñvou, oh he hehela.

4. Sevel a reas ivez aoteriou e ti an Aotrou, euz a behini en-doa lavaret an Aotrou : E Jeruzalem e vezo va ano da viken.

5. Hogen o zevel a reas da oll arme an neñvou, en daou borched euz a di an Aotrou.

6. >Lakaad a reas ivez e vibien da dreuzi an tan e traonienn Benennom ; an hurennoù a arveste, an arouezioù a heulie, d'ar strobinnell en em roe ; hag eñ en-doa gantañ strobinnellerien ha kerlhierien : hag eñ a reas kalz a zroug dirag an Aotrou, a lakaas anezañ da vond droug ennañ.

7. Lakaad a reas ivez eur skeudenn gizellet ha teuzet e ti Doue, diwar-benn pehini en-doa Doue komzet ouz David hag ouz Salomon e vab, o lavaroud : En timañ hag e Jeruzalem, em-eus dilennet e-touez oll vreurieziou Izrael, e likin va ano da viken.

8. Ha ne likin mui troad Izrael da vond er-mêz euz an douar em-eus roet d'o zadou ; gand ma virint hepken ar pez em-eus gourhemennet dezo, an oll lezenn, al lidou hag ar helennou em-eus roet dezo dre henou Moizez.

9. Evel-se Manasez a douellas Juda hag an dud a chome e Jeruzalem, hag o lakaas da ober droug gwasoh eged an oll vroadou en-doa dispennet an Aotrou dirag bugale Izrael.

10. Hag an Aotrou a gomzas outañ hag ouz e bobl ; ha ne fellas ket dezo e zelaou.

11. Rag se Doue a zegasas warnezo priñsed arme roue an Asiried : hag i a gemeras Manasez ; hag o veza lakaet eur chadenn war e zaouarn ha war e dreid, e kasjont anezañ da Vabilon.

12. Hogen Manasez en e anken a bedas an Aotrou, e Zoue, hag e reas eur binijenn vraz dirag an Aotrou, e Zoue.

13. Hag eñ a bedas an Aotrou hag her pedas stard ; hag an Aotrou a glevas ouz e bedenn, hag a zegasas anezañ da Jeruzalem en e rouantelez ; ha Manasez a anavezaz penaoz an Aotrou a oa ar gwir Doue.

14. Goude-ze e savas ar vur a zo en diavêz euz a gêr David, war-zu ar huz-heol euz a Hibon, en draonienn, adaleg porz ar pesked beteg Ofel, oh ober an dro ; hag eñ he savas uhel-braz : lakaad a reas ivez priñsed an arme en oll gêriou-kreñv euz a Juda.

15. Hag eñ a lakaas er-mêz euz a di an Aotrou an doueed a-ziavêz hag ar skeudenn, hag ivez an aoteriou en-doa savet e menez ti an Aotrou hag e Jeruzalem, hag o zaolas oll er-mez euz a gêr.

16. Sevel a reas a-nevez aoter an Aotrou, hag e lazaz warnezi viktimou, hag ostivou a beoh hag a veuleudi. Hag eñ a hourhemennas da Juda servija an Aotrou, Doue Izrael.

17. Hogen ar bobl a ree c'hoaz sakrifisou war al lehiou uhel d'an Aotrou, he Doue.

18. Oberiou all Manasez, hag e bedenn d'e Zoue, hag ivez gerioù ar welerien, pere a gomze outañ e ano an Aotrou, Doue Izrael, en em gav e-touez lavariou roueed Izrael.

19. E bedenn ivez ha selaouidigez Doue, hag e oll behejou hag e zispriz, hag al lehiou e pere e savas lehiou uhel hag e plantas koajou-sakr, hag a reas

skeudennou, a-barz ma reas pinienn, a zo skrivet e lavariou Hozai.

20. Hogen Manasez a gouskas gand e dadou, hag a oe beziet en e di e-unan ; hag Amon, e vab, a renas en e leh.

21. Daou vloaz warn-ugent en-doa Amon pa zeuas da reni, hag eñ a renas daou vloaz e Jeruzalem.

22. Hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, evel m'en-doa greet Manasez e dad ; sakrifisou a reas d'an oll idolou a oa bet greet gand Manasez, hag e servijas anezo.

23. Ha ne zoujas ket an Aotrou, evel m'en-doa doujet Manasez, e dad ; ha torfejou kalz brasoh a reas.

24. E zervijerien a zavas en e eneb hag a lazas anezañ en ti ma chome ennañ e-barz.

25. Hogen ar re all euz ar bobl, goude beza lazet ar re o-doa dispahet ouz Amon, a lakaas Josias da roue en e leh.

XXXIV. Pennad.

Nevezi a ra Josias kevredigez ar bobl gand an Aotrou.

1. Eiz vloaz en-doa Josias pa zeuas da reni, hag eñ a renas eur bloaz ha tregont e Jeruzalem.

2. Ober a reas ar pezh a oa reiz dirag an Aotrou, hag e kerzas e heñchou David e dad ; ha ne zistroas nag a-zehou nag a-gleiz.

3. En eizved bloaz euz e ren, pa n'edo c'hoaz nemed eur bugel, e teraouas klaskoud Doue David, e dad ; Hag en daouzegved bloaz goude ma oa deuet da reni, e hlanas Juda ha Jeruzalem euz al lehiou uhel hag euz ar hoajou-sakr, hag euz an idolou, hag euz ar skeudennou kizellet.

4. Diskaret e oe dirazañ aoteriou Baalim, hag an idolou a oa bet lakaet warnezo a oe torret ivez ; ar hoajou-sakr a oe taolet d'an douar, ha brevet ar skeudennou ; hag an tammou anezo a oe taolet war beziou ar re pere a oa boazet da ober sakrifisou dezo.

5. Ouspenn e tevas eskern ar veleien war aoteriou an idolou, hag e hlanas Juda ha Jeruzalem.

6. Ha diskara a reas oll e kêriou Manasez, hag Efraim, ha Simeon, ha Neftali.

7. Ha goude ma en-doe diskaret an aoteriou hag ar hoajou-sakr, ha brevet an idolou, ha dispennet an oll demplou e oll vro Izrael, e tistroas da Jeruzalem.

8. En triwehved bloaz euz e ren, goude m'en-doe glannaet ar vro ha templ an Aotrou, e kasas Safan, mab Eselia, ha Maasias, priñs kêr, ha Joha, mab Joac'haz, e skrivagner, evid reiza ti an Aotrou, e Zoue.

9. Ar re-mañ a yeas da gavoud Helsias, ar Beleg-braz : hag i a gemeras digantañ an arhant a oa bet degaset da di an Aotrou, hag o-doa dastumet al Levited hag ar borzerien, digand Manasez hag Efraim, hag ar re a chome euz a-douez bugale Izrael, ha digand oll Juda ha Benjamin, hag ar re a chome e Jeruzalem.

10. Hag i e lakaas etre daouarn ar re a oa e penn labourerien ti an Aotrou, evid ma aozjent ha ma reizjent an templ.

11. Hag ar re-mañ e roas d'al labourerien, ha d'ar venerien vein, evid prena mein euz ar mengleuziou ha koad evid framm an ti, hag evid soliera an tiez a oa bet freuzet gand roueed Juda.

12. Hag an dud-mañ a ree pep tra gand fealded. Hogen ar re a oa e penn al labourerien, hag a haste al labour , e oa Jahat hag Abdias euz a vibien Merari, Zac'harias ha Mosollam euz a vibien Kaat : ha Levited e oant oll hag a ouie kana.

13. Hogen ar re a zouge behiou o-doa da benn skribed, ha barnerien, ha porzerien euz a-douez al Levited.

14. Ha pa denned er-mêz an arhant a oa bet degaset da di an Aotrou, Helsias, ar beleg-braz, a gavas eul levr euz a lezenn an Aotrou roet gand dorn Moizez.

15. Hag Helsias a lavaras da Zafan, ar skrivagner : kavet em-eus levr al lezenn e ti an Aotrou : hag eñ e roas dezañ.

16. Ha Safan a gasas al levr d'ar roue, hag a gomzas outañ, o lavaroud : Kement eh-eus roet da ober d'az servijerien a reer bremañ.

17. Teuzet eo bet an arhant a zo bet kavet e ti an Aotrou ; ha roet eo bet d'ar re a zo e penn al labourerien ha d'ar vicherourien e peb doare.

18. Ouspenn, Helsias, ar beleg-braz, en-deus roet din al levr-mañ. Hag eñ e lennas dirag ar roue.

19. Pa glevas ar roue geriou al lezenn, e rogas e zillad.

20. Hag eñ a hourhemennas da Helsias, ha da Ahikam, mab Safan, ha da Abdou, mab Micha, ha da Zafan ar skrivagner, ha da Asaas, servijer ar roue, o lavaroud :

21. It ha pedit an Aotrou evidon hag evid ar re a chom euz a-douez bugale Izrael ha Juda diwar-benn oll heriou al levr-se a zo bet kavet : rag braz eo froudenn an Aotrou en on eneb, o veza n'o-deus ket on tadou selaouet geriou an Aotrou, ha n'o-deus ket greet kement a zo skrivet el levr-se.

22. Helsias eta, hag ar re a oa bet kaset gand ar roue, a yeas da gavoud Olda ar brofedez, gwreg Sdellum, mab Tekuat, mab Hasra, mirer an dillad. Houmañ a chome e Jeruzalem, en eil kloz euz ar gêr ; hag hi a zanevellas dezi ar pez on-eus lavaret kentoh.

23. Hag hi a lavaras dezo : Evel-henn e lavar an Aotrou, Doue Izrael. livirit d'an den en-deus ho kaset etrezeg ennon :

24. Evel-henn e lavar an Aotrou : Setu e tegasin war al leh-mañ ha war ar re a chom ennañ, an drougou hag an oll valloziou a zo skrivet el levr-se, a zo bet lennet dirag roue Juda,

25. O veza ma o-deus va dilezet, ha ma o-deus greet sakrifisou da zoueed a-ziavêz, evid va heskina gand oll oberiou o daouarn ; rag se e komzo va froudenn war al leh-mañ, ha ne habaskay ket.

26. Hogen da roue Juda, pehini en-deus ho kaset evid pedi an Aotrou, e leverot an dra-mañ : Evel-henn e lavar an Aotrou, Doue Izrael : O veza ma eh-eus selaouet geriou al levr-se ;

27. Ma eo bet tenerraet da galon, ma out en em uvellaet dirag Doue en abeg d'ar pez a zo bet lavaret a-eneb al leh-mañ, ha d'ar re a chom e Jeruzalem ; ma eh-eus doujet va dremm, ma eh-eus roget da zillad, ha ma eh-eus skuillet daerou dirazon ; me ivez em-eus selaouet ouzit, eme an Aotrou.

28. Rag se az likin da vond gand da dadou, hag e tiskenni e peoh en da vez ; ha ne welo ket da zoulagad an oll zroug a gasin war al leh-se, ha war ar re a chom ennañ. Hag ar re-mañ a zanevellas d'ar roue kement he-doa lavaret-hi.

29. Hag ar roue o veza strollet oll henaoured Juda ha Jeruzalem,

30. A bignas da di an Aotrou, ha gantañ oll dud Juda, hag ar re a chom e Jeruzalem, hag ar veleien, hag al Levited, hag an oll bobl, euz ar bihanna beteg ar brasa. Hag ar re-mañ oh he selaoui e ti an Aotrou, e lennas ar roue dezo oll heriou

al levr :

31. Hag o veza en em lakaet en e zav en e gador-varn, e reas kevredigez gand an Aotrou, evid kerzoud war e lerh, ha miroud e gelennou, hag e desteniou, hag e lidou, a-greiz e galon hag e ene, hag evid ober kement a oa skrivet el levr-se en-doa lennet.

32. Lakaad a reas ivez da doui kement-se ar re oll a oe kavet e Jeruzalem hag e Benjamin ; ar re a chome e Jeruzalem a aotreas ivez kevredigez an Aotrou, Doue o zadou.

33. Evel-se Josias a gasas kuit an oll fallagriezou euz a zouarou bugale Izrael : hag eñ a lakaas ar re oll a chome en Izrael, da zervija an Aotrou, o Doue. Ha keit ha ma vevas-eñ, ne zilezjont ket an Aotrou, Doue o zadou.

XXXV. Pennad.

Josias a laka lida ar Pask.

1. Hogen Josias a reas Pask an Aotrou e Jeruzalem ; hag eñ a oe lazet¹⁷⁶ er pevarzegved euz ar miz kenta.

2. Hag eñ a lakaas ar veleien en o hargou, hag o alias da zervija e ti an Aotrou.

3. Komza a reas ivez ouz al Levited, gand gouiziegez pere e oa en em zantellaet Izrael oll d'an Aotrou : Likit an arh e santuar an templ en-deus savet Salomon, mab David, roue Izrael ; rag n'he dougot mui : hogen bremañ servijit an Aotrou ho Toue, hag e bobl a Izrael.

4. En em reizit eta hervez ho tiadou hag ho kerentiezou diouz rann pep hini, evel m'en-deus gourhemennet David, roue Izrael, ha ma en-deus skrivet Salomon, e vab.

5. Ha servijit ar santuar, hervez an tiadou ha bandennou al Levited.

6. Ha goude ma vint bet santellaet, lazit ar Pask : ha reizit ho preudeur, evid ma hellint ober ar pez en-deus gourhemennet an Aotrou dre heriou Moizez.

7. Josias a roas d'an oll bobl en em gavas e lid Pask, ein ha menned gevr euz an tropellou, hag euz ar chatal all, tregont mil, ha tri mil ejenn, hag i oll euz a zanvez ar roue.

8. E ofiseien a ginnigas ivez ar pez o-doa gouestlet anezo o-unan, ken d'ar bobl, ken d'ar veleien ha d'al Levited. Ouspenn-ze Helsias, ha Zac'harias, ha Jahiel, priñsed ti an Aotrou, a roas d'ar veleien evid ober ar Pask daou vil c'hwehkant euz a chatal kemmesket, ha tri-hant ejenn.

9. Hogen Konenias, ha Semeias, ha Natanael e vreudeur, hag ivez Hasabias, ha Jehiel, ha Jozabad, priñsed al Levited, a roas d'al Levited all, evid lida ar Pask, pemp mil euz a chatal kemmesket, ha pemp-kant ejenn.

10. Goude ma oe aozet pep tra evid kement-se, ar veleien a zavas en o harg, hag al Levited ivez en o bandennou, hervez gourhemenn ar roue.

11. Lazet e oe eta ar Pask ; hag ar veleien o-unan a skuillas ar gwad anezo, hag al Levited o diskrohennas.

12. Hag i o rannas, evid o lodenna diouz an tiez hag an tiadou, hag o hinnigas d'an Aotrou, evel ma eo skrivet e levr Moizez : en heveleb tra e rejont e-keñver an

¹⁷⁶ eñ a oe lazet : ar Pask a oe lazet.

ejenned.

13. Hag i a rostas ar Pask war an tan, evel ma oe skrivet el lezenn : hogen an ostivou a beoh a boazjont e kaoteriou, e pilligou hag e podou.

14. Hogen goude-ze eh aozjont evito hag evid ar veleien ; rag ar veleien a chomas beteg an noz o kinniga ar sakrifisou-losk hag al lard anezo ; rag se al Levited ne aozjont evito hag evid ar veleien nemed ar re ziweza.

15. Hogen ar ganerien, mibien Asaf, a oa ivez eno en o zav hag en o reiz hervez gourhemenn David, hag Asaf, hag Heman, hag Idilun, profeded ar roue ; ar borzerien ivez a evesae ouz an oll borziou, hep pellaad e nep pred euz o harg : rag se al Levited o breudeur a aozas boued evito.

16. Oll gehelidigez an Aotrou a oe eta sevenet en deiz-se evid ober ar Pask, hag evid kinniga skarifisou-losk war aoter an Aotrou, hervez gourhemenn ar roue Josias.

17. Ha bugale Izrael, pere en em gavas eno, a reas ar Pask en amzer-ze, hag a lidas gouel ar bara-dihoell e-pad seiz devez.

18. Ne oe ket a Bask heñvel ouz hemañ en Izrael, abaoe amzer Samuel ar profed : ha ne oe hini euz a roueed Izrael a gement a reas ar Pask, evel ma reas Josias ; hag ar veleien, hag al Levited, hag oll Juda, hag ar re oll euz a Izrael en em gavas eno, hag ar re a chome e Jeruzalem.

19. Ar Pask-se a oe lidet en triwehved bloaz euz a ren Josias.

20. Goude m'en-doe Josias aozet an templ, Nec'hao, roue an Ejipt, a bignas evid stourmi ouz Karkamis, nez an Eufratez ; ha Josias a gerzas evid e ziarbenn.

21. Hogen Nec'hao a gasas kannaded dezañ, pere a lavaras dezañ : Petra a zo etre te ha me, roue Juda ; Ne zeuan ket en da eneb hirio, hogen a-eneb eun ti all a vrezelekaan, a-eneb pehini en-deus Doue gourhemennet din kerzoud buan ; ehan eta da enebi ouz Doue a zo ganen, gand aon n'az lazje.

22. Ne fellas ket da Josias mond war e hiz : hogen en em aozas a reas evid stourmi ouz Nec'hao, ha ne zelaouas ket ar pez a lavare dezañ a-berz Doue : hag eñ a gerzas bepred evid stourmi e mêziou Mageddo.

23. Hag eno o veza bet gloazet gand gwaregerien, e lavaras d'e baotred : Va zennit euz an emgann, rag gwall hloazet on.

24. Hag i a lakaas anezañ euz a eur harr en eur harr all a oa war e lerh, hervez kiz ar roueed, hag a gasas anezañ da Jeruzalem : hag eñ a varvas hag a oe beziet e bez e dadou ; hag oll Juda ha Jeruzalem a ouelas diwar e benn.

25. Ha dreist-oll Jeremias, klemmvanou pehini war maro Josias a zo kanet beteg-henn gand an oll ganerien hag an oll ganerezed : ha kement-se a oe kemeret evel da lezenn gand Izrael ; ha skrivet eo er hlemmvanou.

26. Hogen oberiou all Josias, hag e drugareziou, a zo heñvel ouz lezenn an Aotrou.

27. Hag e oll oberiou, ken ar re genta, ken ar re ziweza, a zo skrivet e levr roueed Juda hag Izrael.

XXXVI. Pennad.

Kemeret eo Jeruzalem, hag ar bobl kaset da Vabilon.

1. Neuze pobl ar vro-ze a gemeras Joac'haz, mab Josias, hag e lakaas anezañ da roue e-leh e dad e Jeruzalem.

2. Tri bloaz warn-ugent en-doa Joac'haz pa zeuas da reni ; hag eñ a renas tri miz e Jeruzalem.
3. Hogen roue an Ejipt o veza deuet da Jeruzalem, e dennas diwar e dron, hag a varnas ar vro da baea dezañ kant talant arhant hag eun talant aour.
4. Hag eñ a lakaas Eliakim, e vreur, da roue en e leh war Juda ha Jeruzalem ; hag e troas e ano e Joakim ; hag eñ a gemeras Joac'haz hag e gasas gantañ d'an Ejipt.
5. Pemp bloaz warn-ugent en-doa Joakim pa zeuas da reni, hag eñ a renas unneg vloaz e Jeruzalem ; hag eñ a reas an droug dirag an Aotrou, e Zoue.
6. Nabukodonozor, roue ar Haldeed, a bignas a-eneb hemañ, hag o veza e chadennet, her hasas da Vabilon.
7. Kas a reas ivez di listri an Aotrou, hag e lakaas anezo en e dempl.
8. Oebriou all Joakim, hag ar fallagriezou a reas, hag a oe kavet ennañ, a lenner e levr roueed Juda hag Izrael. Hogen Joac'him, e vab, a renas en e leh.
9. Eiz vloaz en-doa Joac'him pa zeuas da reni ; hag eñ a renas tri miz ha deg devez e Jeruzalem : ober a reas ivez an droug dirag templ an Aotrou.
10. Hag a-benn eur bloaz, ar roue Nabukodonozor a gasas brezelidi, pere a zegasas anezañ da Vabilon, ha gantañ al listri ar re dalvoudusa euz a di an Aotrou ; hag eñ a lakaas da roue war Juda ha Jeruzalem Sedesias, e eontr.
11. Eur bloaz warn-ugent en-doa Sedesias pa zeuas da reni, hag eñ a renas unneg vloaz e Jeruzalem.
12. Ober a reas an droug dirag an Aotrou, e Zoue, ha n'en-doe ket a zoujañs evid Jeremias, ar profed, pehini a gomze outañ a-berz an Aotrou.
13. Pellaad a reas zoken diouz ar roue Nabukodonozor, pehini en-doa e lakaet da doui dre ano Doue ; hag eñ a galedas e benn hag e galon, evid na zistroje mui etrezeg an Aotrou, Doue Izrael.
14. Oll briñsed ar veleien, hag ar bobl, en em roas ivez da oll fallagriezou ar broadou ; hag i a zaotras ti an Aotrou, en-doa santellaet evitañ e Jeruzalem.
15. Hogen an Aotrou, Doue o zadou, a gase e gannaded etrezeg enno evid o helenna diouz ar mintin, hag 'hed an deiz, evid m'en-divije truez oh e bobl hag oh e di.
16. Hogen i a reas goap euz a gannaded Doue, hag a zisprizas e heriou ; hag i a walgasas ar brofeded, ken na zavas droug en Aotrou a-eneb e bobl ha ne oe mui a baredigez.
17. Rag eñ a gasas warnezo roue ar Haldeed, pehini a lazas gand ar hleze o zud yaouank e ti e zantuar ; n'en-doe truez nag ouz ar baotred yaouank, nag ouz ar plahed yaouank, nag ouz ar re goz, hag ouz ar re hirhoalet : hogen eñ o lakaas oll etre e zaouarn.
18. Oll listri templ an Aotrou, ken ar re vraz, ken ar re vihan, ha teñzoriou an templ, hag ar roue hag ar briñsed, a oe kaset gantañ da Vabilon.
19. An enebourien a zevas ti an Aotrou, hag a ziskaras muriou Jeruzalem : lakaad a rejont an tan en oll douriou, hag e tiskarjont kement tra talvouduz.
20. Ma oa tehet eur re diouz ar hleze, e oe kaset da Vabilon evid servija ar roue hag e vibien, ken na renje roue ar Bersied ;
21. Ha ne oe sevenet ar ger en-doa roet an Aotrou dre henou Jeremias, ha ne oe lidet gand ar vro he deziou sabbat ; rag er sabbat e oe e oll zeziou he gloaz¹⁷⁷, ken na oe leuniet an deg vloaz ha tri-ugent.

¹⁷⁷ e oe e oll zeziou he gloaz : e oe gwastet ar vro.

22. Hogen er bloaz kenta euz a Zirus, roue ar Bersied, an Aotrou, evid seveni ar ger en-doa lavaret dre henou Jeremias, a gefluskas kalon Sirus, roue ar Bersied, pehini a embannas kement-mañ dre skrid en e rouanteelz oll.

23. Evel-henn e lavar Sirus, roue ar Bersied : An Aotrou, Doue an neñv, en-deus roet din oll rouanteleziou an douar, hag eñ en-deus gourhemennet din sevel eun ti dezañ e Jeruzalem a zo er Juda. Piou ahanoh a zo euz e bobl ? Ra vezo an Aotrou, e zoue, gantañ, ha ra bigno-eñ.

ESDRAS

Levr kenta

II. Pennad

Sirus a lez ar Iuzevien da zistrei da Jeruzalem ha da zevel an templ a-nevez.

1. Er bloavez kenta euz a Zirus, roue ar Bersied, evid seveni ar ger en-doa roet dre henou Jeremais, e lakaas an Aotrou spered roue ar Bersied da zevel, ha da embanna en e rouantelez oll, o lavaroud

2. Evel-henn e lavar Sirus, roue ar Bersied : An Aotrou, Doue an neñv, en-deus roet din oll rouanteleziou an douar ; hag eñ en-deus gourhemennet din ma savjen eun ti dezañ e Jeruzalem, a zo er Judea.

3. Piou ahanoh a zo euz e bobl ? Ra vezo e Zoue gantañ. Ra bigno e Jeruzalem, a zo er Judea, ha ra zavo a-nevez ti an Aotrou, Doue Izrael, pehini eo Doue a zo e Jeruzalem.

4. Hag an dud all, e pe leh bennag ma chomont, ra gennerzint anezañ euz al leh e pehini en em gavont, hag en arhant, hag en aour, hag en danvez, hag el loened ; heb niveri ar pez a ginnigont a youl vad e templ Doue a zo e Jeruzalem.

5. Neuze priñsed tiadou Juda ha Benjamin a zavas hag ivez ar veleien, hag al Levited, ha kement hini a oe kentraouet e spered gand Doue, evid pigna da zevel templ an Aotrou a zo e Jeruzalem.

6. Hag ar re oll a oa war-dro, a gennerzas anezo e listri arhant hag aour, e danvez, hag e loened, hag e arrebeuri, heb niveri ar pez a oa kinniget a youl vad.

7. Ar roue Sirus a zistaolas ivez dezo listri templ an Aotrou en-doa degaset Nabukodonozor euz a Jeruzalem, hag en-doa lakaet e templ e Zoue.

8. Sirus, roue ar Bersied, o hasas dre zorn Mitridates, mab Gazabar, pehini o roas dre niver da Zasabazar, priñs Juda.

9. Ha setu amañ an niver anezo : tregont plad aour, mil plad arhant, nao hontell warn-ugent, tregont kop aour.

10. Pevar-hant kop aour hag arhant ez oa pemp mil ha pevar-hant. Sasabazar o hasas oll gantañ, gand ar re a zistroas da Jeruzalem goude dezougadur Babilon.

II. Pennad.

Niver an dud a zistroas euz a Vabilon d'ar Judea.

1. Setu an niver euz a vugale Izrael, pere, goude beza bet kaset e sklaverez da Vabilon, gand Nabukodonozor, roue Babilon, a zistroas da Jeruzalem ha da Juda, pep hini d'e gêr.

2. Ar re a zeuas gand Zorobabel, Josue, Nehemias, Saraia, Rahelaia, Mardoc'hai, Belson, Mesfar, Beguai, Rebum, Baana. Ha niver tud pobl Izrael :

3. Mibien Faros : Daou vil daouzeg hag eiz-ugent.
4. Mibien Sefatia : Daouzeg ha triweh-ugent.
5. Mibien Area : Seiz-kant pemzeg ha tri-ugent.
6. Mibien Fahat-Moab, euz a vibien Josue-Joab : Daou vil eiz-kant daouzeg.
7. Mibien Elam : Mil daouzeg ha daouzeg-ugent.`
8. Mibien Zetua : Nao-hant pemp ha daou-ugent.
9. Mibien Zac'hai : Seiz-kant ha tri-ugent.
10. Mibien Bani : C'hweh-kant daou ha daou-ugent.
11. Mibien Bebai : C'hweh-kant tri warn-ugent.
12. Mibien Azgad : daouzeg-kant daou warn-ugent.`
13. Mibien Adonikam : C'hweh-kant c'hweh ha tri-ugent.
14. Mibien Beguai : Daou vil c'hweh hag hanter-kant.
15. Mibien Adin : Pevar-hant pevar hag hanter-kant.
16. Mibien Ater, a zeue eue a Ezec'hia : Triweh ha pevar-ugent.
17. Mibien Besai : Tri-hant tri warn-ugent.
18. Mibien Joza : Daouzeg ha kant.
19. Mibien Hasum : Daou-hant tri warn-ugent.
20. Mibien Gebbar : Pemzeg ha pevar-ugent.
21. Mibien Betlehem : Tri ha c'hweh-ugent.
22. Tud Netufa : C'hweh hag hanter-kant.
23. Tud Anatot : Eiz ha c'hweh-ugent.
24. Mibien Armavel : Daou ha daou-ugent.
25. Mibien Kariatiarim, Kefira, ha Berot : Seiz-kant tri ha daou-ugent.
26. Mibien Rama ha Gabaa : C'hweh-kant unan warn-ugent.
27. Tud Mac'hmas : Daou ha c'hweh-ugent.
28. Tud Betel hag Hai : tri hag unneg-ugent.
29. Mibien Neho : Daou hag hanter-kant.
30. Mibien Magbis : C'hweh hag hanter-kant.
31. Mibien an Elam all : Daouzeg-kant pevar hag hanter-kant.
32. Mibien Harim : C'hwezeg-ugent.
33. Mibien Lod, Hadid, hag Ono : Seiz-kant pemp warn-ugent.
34. Mibien Jeriko : Pemp ha seiteg-ugent.
35. Mibien Senaa : Tregont ha triweh-ugent.
36. Ar veleien : Mibien Jadaia e ti Josue : nao-hant trizeg ha tri-ugent.
37. Mibien Emmer : Mil daou hag hanter-kant.
38. Mibien Feshur : daouzeg-kant ha seiz-ugent.
39. Mibien Harim : Deg-kant ha seiteg.
40. Al Levited : Mibien Josue ha Kedmihel : pevarzeg ha tri-ugent.
41. Ar ganerien : Mibien Asaf : Eiz ha c'hweh-ugent.
42. Mibien ar borzerien : Mibien Sellum, mibien Ater, mibien Telmon, mibien Akkub, mibien Halita, mibien Sobai : Naonteg ha c'hweh-ugent.
43. An Natineed : Mibien Siha, mibien Hasufa, mibien Tabbaot,
44. Mibien Seros, mibien Sias, mibien Fadon,
45. Mibien Lebana, mibien Hagaba, mibien Akkub,
46. Mibien Habagb, mibien Semlai, mibien Hanan,
47. Mibien Gaddel, mibien Gaher, mibien Rasia,
48. Mibien Rasin, mibien Nekoda, mibien Gazam,
49. Mibien Aza, mibien Fasea, mibien Fasea, mibien Besee,
50. Mibien Asena, mibien Munim, mibien Nefasim

51. Mibien Bakkub, mibien Hakufa, mibien Harbur,
 52. Mibien Beslut, mibien Mahida, mibien Harsa,
 53. Mibien Berkos, mibien Sirara, mibien Tema,
 54. Mibien Nasia, mibien Hatifa,
 55. Mibien servijerien Salomon, mibien Sofai, mibien Soferet, mibien Faruda,
 56. Mibien Jala, mibien Derkon, mibien Geddel,
 57. Mibien Safatia, mibien Hatil, mibien Foc'heret, pere a oa euz a Asebaim,
 mibien Ami,
 58. An oll Natineed, ha mibien servijerien Salomon : Tri-hant daouzeg ha
 naonteg-ugent.
 59. Hag ar re a bignas euz a Delmala, euz a Delharsa, euz a Gerub, euz a Adon
 hag euz a Emer ; ha pere na helljont ket rei da anaoud ti o zadou, nag o gouenn, na
 ma oant euz a Izrael.
 60. Mibien Dalaia, mibien Tobia, mibien Nekoda ; C'hweh-kant daou hag
 hanter-kant.
 61. Hag euz a vibien ar veleien : Mibien Hobia, mibien Akkos, mibien
 Berzellai, pehini a gemeras da wreg unan euz a verhed Berzellai euz a Halaad, hag
 a oe galvet euz o ano.
 62. Ar re-mañ a glaskas skrid o herentiez, ha ne gavjont ket anezañ ; hag i a oe
 pellaet euz ar velegiez.
 63. Hag Atersata a lavaras dezo n na zebrjont ket kig sant¹⁷⁸ ar zent, ken na
 zavje eur beleg desket ha klok.
 64. An oll dud-se evel unan, daou vil ha daou-ugent tri-hant ha tri-ugent :
 65. Heb niveri o mevelou hag o mitizien, pere a oa seiz mil tri-hant seiz ha
 tregont ; hag en o mesk daou-hant kaner ha kanerez.
 66. Ganto ez oa seiz-kant marh c'hweh ha tregont ha daou-hant mil pemp ha
 daou-ugent.
 67. Ganto ez oa pevar-hant kañval pemp ha tregont, ha c'hweh mil seiz-kant
 azen hag ugent.
 68. Ha lod euz a bennou an tiadou o veza deuet e-barz Jeruzalem, el leh ma oa
 bet ti an Aotrou, a ginnigas anezo o-unan peadra da zevel adarre ti an Aotrou en e
 leh.
 69. Rei a rejont hervez o galloud evid mizou al labour, mil dram aour ha tri-
 ugent mil, pemp mil min arhant, ha kant gwisk beleien.
 70. Ar veleien eta hag al Levited, hag ar re euz ar bobl, hag ar ganerien, hag ar
 borzerien hag an Natineed, a yeas da chom en o hêriou ; hag oll Izrael pep hini en
 e gêr.

III.Pennad.

Diazeza a reer an templ.

1. Pa oe deuet ar seizved miz, abaoe ma oa deuet mibien Izrael en o hêriou, ar
 bobl en em strollas evel eun den hepken e Jeruzalem.

¹⁷⁸ sant : santel.

2. Ha Josue, mab Josedek, hag e vreudeur pere a oa beleien, ha Zarobahel, mab Salatiel, hag e vreudeur, a zeuas da zevel eun aoter da Zoue Izrael, evid kinniga warnezi sakrifisou-losk, evel ma eo skrivet e lezenn Moizez, an den Doue.

3. Hag i a lakaas aoter Doue war he diazez, petra bennag ma enebe outo ar poblou a oa war o zro ; hag e kinnigjont sakrifisou-losk d'an Aotrou diouz ar mintin ha diouz ar pardaez.

4. Hag i a reas goule an tellou, evel ma eo skrivet, hag a ginnigas ar sakrifis-losk, evel ma eo kemennet e obe a zeiz e deiz.

5. Goude-ze e kinnigjont ar sakrifis-losk peurbaduz, ken en deiziou kenta euz ar miz, ken en oll lidou a oa gouestlet d'an Aotrou, hag er re oll e pere e oa kinniget a youl vad rouo d'an Aotrou.

6. Adaleg ar henta deiz euz ar seizved miz e teraoujont kinniga sakrifisou-losk d'an Aotrou : hogen ne oa ket c'hoaz diazezet templ Doue.

7. Hogen i a roas arhant d'ar venerien mein ha d'ar vasonerien : rei a rejont ivez da zebri ha da eva, hag eoul d'ar Sidonied ha d'an D/Tiried, evid ma tegasjent koad sedr euz al Liban da vor Joppe, hervez m'en-doa Sirus, roue ar Bersied, e hourhemennet dezo.

8. Hogen en eil bloaz, goude ma oant deuet da Jeruzalem, el leh ma oa bet ti an Aotrou, en eil miz, Zorobabel, mab Salatiel, ha Josue, mab Josedek, hag o breudeur all, beleien ha Levited, hag ar re oll a oa deuet euz ar sklaverez da Jeruzalem, a zavas Levited, adaleg ugent vloaz hag ouspenn, evid hasta labour an Aotrou.

9. Ha Josue gand e vibien hag e vreudeur, Kedmihel hag e vibien, ha mibien Juda, evel eun den hepken, a zavas evid hasta ar re a labore e templ Doue ; mibien Henadad, hag o mibien, hag o breudeur al Levited.

10. Pa oe eta diazezet templ an Aotrou gand ar vasonerien, ar veleien a zavas en o gwiskou ha gand kornou-boud ; hag al Levited, mibien Asaf, gand o zimalou, evid meuli Doue, dre heriou David, roue Izrael.

11. Hag i a lavare en o hanaouennou, hag e meuleudi an Aotrou : O veza ma eo mad, ha ma ema e drugarez da viken war Izrael. Hag an oll bobl a harme kaer o veuli an Aotrou, o veza ma oa diazezet templ an Aotrou.

12. Hogen kalz euz ar veleien hag euz al Levited, euz a bennou an tiadou, hag euz an henaoured, pere o-doa gwelet an templ kenta, hag a wele hemañ en e ziazez, a leñve gand eur vouez kreñv : ha kalz re all a harme gand levenez, o sevel o mouez.

13. Ha ne helle den anaoud garm ar re en em laouennae, diouz garm ar re a leñve ; rag kemmesket e oa garm ar bobl, hag a-bell e oe klevet.

IV. Pennad.

Artakzersez a zivenn na ve savet an templ.

1. Hogen enebourien Juda ha Benjamin a glevas penaoz mibien ar sklaverez o-doa savet eun templ d'an Aotrou, Doue Izrael :

2. Hag o veza deuet da gavoud Zorobabel, ha priñsed an tiadou, e leverjont dezo : Ra zavim an ti ganeoh, rag ni evelдох on-eus klasket ho Toue : ha ni on-eus lazet viktimou dezañ abaoe deiziou Asor-Haddan, roue an Asiria, pehini en-deus or haset amañ.

3. Ha Zorobabel, ha Josue, hag ar briñsed all euz a diadou Izrael a lavaras dezo : N'hellom ket sevel ganeoh eun ti d'on Doue, hogen ni on-unan a zavo eun ti d'an Aotrou, on Doue, evel m'en-deus e hourhemennet deom Sirus, roue ar Bersied.

4. Evel-se pobl ar vro a viras ouz pobl Juda na zavjent eun templ, hag a reustlas anezo.

5. Kas a rejont ivez kuzulierien en o eneb, evid dismantra o dezo e oll zeiziu Sirus, roue ar Bersied, ha beteg ren Darius, roue ar Bersied.

6. Hogen e ren Asuerus, e derou e ren, e skrivjont eun tamall a-eneb ar re a chome e Juda hag e Jeruzalem.

7. Hga e deizou Artakzersez, Beselam, Mitridtes, ha Tabeel, hag ar re all a oa en o huzul, a skrivas da Artakzersez, roue ar Bersied : hogen al lizer a damall a oa skrivet e siriag, hag a oa lennet e yez Siria.

8. Reum Beelteem, ha Samsai, ar skrivagner, a skrivas eul lizer diwar-benn Jeruzalem d'ar roue Artakzersez, evel henn :

9. Reum Beelteem, ha Samsai, ar skrivagner, hag o huzulierien all, an Dineed, an Afarsatac'heed, an D/Terfaleed, an Afarseed, an Erc'hueed, ar Vabilonied, ar Zuzanec'hied, an Dieveed, hag an Elamited,

10. Hag ar re all euz ar poblou, en-doa dezouget Asenafar ar braz hag ar brudet, hag en-doa lakaet da chom e peoh e kêriou Samari, hag er broiou all en tu all d'ar ster.

11. Setu ar skwer euz al lizer a gasjont dezañ : D'ar roue Artakzersez, da zervijerien, ar re a zo en tu all d'ar ster, a zalud ahanout.

12. Ra ouezo ar roue, penaoz ar Iuzevien, pere eh-eus kaset en on touez, a zo deuet da Jeruzalem kêr dispahuz ha droug, hag e savont anezi a-nevez, hag eh aozont he muriou hag he ziez.

13. Ra ouezo eta bremañ ar roue, penaoz mar bez savet a-nevez ar gêr-ze, ha mar bez aozet he muriou, ne roint mui ar gwiriou, nag an tellou, nag al leveou bloazieg, ha kement-se a ray gaou ouz ar roueed o-unan.

14. Hogen ni, o veza ma on-eus koun euz ar boued on-eus debret e ti ar roue, ha ne fell ket deom e ve greet gaoud ebed outañ, on-eus kaset evid anaoud kement-se dezañ.

15. Evid ma klaski e oberiou da dadou, hag e kavi skrivet penaoz ar gêr-ze a zo eur gêr dispahuz, he-deus greet gaou ouz ar roueed hag ouz ar proviñsou, hg he-deus degaset brezelioù a beb amzer : ha rag se eo bet dismantret ar gêr-ze.

16. Kement-mañ a room da anaoud dit, o ! roue ; rag mar bez savet he muriou, n'az-pezo mui glad ebed en tu all d'ar ster.

17. Ar roue a skrivas ivez da Reum Beelteem, ha da Zamsai ar skrivagner, ha d'ar re all euz a Zamari a oa euz o huzul, ha d'ar re all en tu all d'ar ster, oh heta dezo ar yehed hag ar peoh.

18. Al lizer a damall hoh-eus kaset din, a zo bet lennet din gand preder.

19. Ha me em-eus gourhemenent : hag eo bet enklasket ha kavet penaoz ar gêr-ze a-bell amzer a zo en em zispahet ouz ar roueed, ha penaoz eo bet savet enni kefluskou emgannou.

20. Rag e Jeruzalem ez eus bet roueed, pere o-deus astennet o beli war an oll vro a zo en tu all d'ar ster ; hag i a zave eno gwiriou, ha tellou, ha leveou.

21. Bremañ eta selaouit va barn : Mirit ouz an dud-se na zavint ar gêr-ze, ken na roin eur gourhemenn nevez dezo.

22. Likit evez na reeh kement-se dibreder, ha na greskfe an droug a-eneb ar roueed.

23. Ar skwer euz a lizer ar roue Artakzersez a oe lennet dirag Reum Beelteem, ha Samsai ar skrivagner, hag o huzulierien ; hag ar re-mañ a yeas buan da Jeruzalem da gavoud ar Iuzevien, hag a viras outo na labourjent.

24. Neuze labour ti an Aotrou a oe paouezet e Jeruzalem, ha ne oe greet mui nemed e eil bloaz ren Darius, roue ar Bersied.

V. Pennad.

Aggeüs ha Zac'harias a ali ar bobl da zevel a-nevez an templ.

1. Neuze Aggeüs, ar profed, ha Zac'harias, mab Addo, a ziougane d'ar Iuzevien a oa e Juda hag e Jeruzalem ; hag i a ziougane e ano Doue Izrael.

2. Neuze Zerobabel, mab Salatiel, ha Josue, mab Josedez, a zavas hag a zeraouas da zevel templ Doue e Jeruzalem, ha profeded Doue a oa ganto hag o hennerze.

3. Hogen en amzer-ze Tatanai pehini a oa dug en tu all d'ar ster, ha Starbuzanai, hag o huzulierien a zeuas etrezeg enno, hag a gomzas outo evel-henn : Piou en-deus roet deoh an ali da zevel an ti-ze, ha da aoza e vuriou ?

4. Ha ni a lavaras dezo anoiou ar re o-doa aliet ahanom d'e zevel.

5. Hogen lagad o Doue a zellas ouz henaoured ar Iuzevien, hag ar re-ze ne helljont ket enebi outo. Ha mad e oe kavet kas kement-se dirag Darius, ha ma respontje ar Iuzevien dirazañ d'an tamall-ze.

6. Setu eur skwer euz al lizer a gasas Tatanai, dug ar vro en tu all d'ar ster, ha Starbuzanai, hag o huzulierien an Arfarsac'heied, a oa en tu all d'ar ster, d'ar roue Darius.

7. Al lizer a gasjont dezañ a oa skrivet evel-henn : Oll beoh d'ar roue Darius.

8. Ra ouezo ar roue penoaz om bet e proviñs ar Judea, e ti an Doue braz, a zaver gand mein digompez, ha war mogeriou pehini eo savet ar hoaderez ; hag al labour-ze a zo greet gand preder, hag a gresk en o douarn.

9. Komzet on-eus ouz an henaoured anezo, hag on-eus lavaret dezo : Piou en-deus roet deoh ar galloud da zevel an ti-ze ha da aoza ar muriou-ze ?

10. Goulennet on-eus o anoiou diganto, evid o rei da anaoud dit : ha skrivet on-eus anoiou ar briñsed anezo.

11. Ha setu penoaz o-deus respontet deom o lavaroud : Ni a zo servijerien Doue an neñv hag an douar, hag e savom a-nevez an templ a oa bet savet pell amzer 'zo, hag a oa bet diazezet ha savet gand eur roue braz euz a Izrael.

12. Hogen goude m'o-doa on tadou tennet warnezo buanegez Doue an neñv, eñ o lakaas etre daouarn Nabukodonozor, roue Babilon ar Haldead ; an ti-ze a zsimantras ivez, hag e tezougas e bobl da Vabilon.

13. Hogen ar bloavez kenta euz a ren Sirius, roue Babilon, ar roue Sirius a roas eur gourhemenn evid an ti Doue-mañ.

14. Hag al listri aour hag arhant euz a dempl Doue, en-doa tennet Nabukodonozor euz an templ a oa e Jeruzalem, hag en-doa dezouget e templ Babilon, ar roue Sirius o zenna euz a dempl Babilon, hag o roas war e her da Zasabazar, en-doa lakaet da briñs,

15. Hag a lavaras dezañ : Kemer al listri-ze, kee, ha laka anezo en templ a oa e Jeruzalem, ha bezet savet ti Doue en e leh.

16. Neuze Sasabazar a zeuas, hag a lakaas diazez an templ e Jeruzalem : hag abaoe neuze bete-vremañ emeur oh e zevel, ha n'eo ket c'hoaz peurhreet.

17. Bremañ eta, mar kav mad ar roue, bezet enklasket e ti levriou ar roue a zo e Babilon, mar deo bet¹⁷⁹ gourhemennet gand ar roue Sirius sevel a-nevez ti Doue e Jeruzalem ; ha kaset ar roue deom e youl war kement-se.

VI. Pennad.

Peurhreet eo an templ. Ar Pask a lider ennañ.

1. Neuze ar roue a reas eur gourhemenn, hag e oe enklasket e ti al levriou a oa e Babilon.

2. Hag e oe kavet e Ekbalanis, a zo eur hastell e proviñs Media, eul levr, war pehini e oa skrivet kement-mañ :

3. Er bloavez kenta euz a ren Sirius, ar roue Sirius, a hourhemennas e vije savet ti Doue a oa e Jeruzalem, el leh ma kinniged ostivou, ha ma vije lakaet eun diazez evid dougen eun ti a dri-ugent ilinad a uhelled, hag euz a dri-ugent ilinad a led ;

4. E vije teir reiz mein digompez, ha reiziou koad nevez : ha ma vije greet ar mizou gand ti ar roue.

5. E vije distaolet al listri aour hag arhant euz a dempl Doue, en-doa tennet Nabukodonozor euz a dempl Jeruzalem, evid o has da Vabilon, ha ma vijent dezouget d'an templ, el leh ma edont kent e templ Doue.

6. Bremañ eta Tatanai, dug ar vro a zo en tu all d'ar ster, Strabuzanai, ha c'hwi, Afarsac'heed, o huzulierien, a zo en tu all d'ar ster, pellait diouto ;

7. Ha na viriot ket ouz dug ar Iuzevien hag o henaoured, da ober eun templ da Zoue, ha da zevel eun ti dezañ en e leh.

8. Gourhemennet em-eus ivez petra a dleer da ober e-keñver beleien ar Iuzevien, evid sevel an ti-ze da Zoue ; hag euz a espern ar roue, hag euz an tellou a zaver war ar vro en tu all d'ar ster, ma vezo roet dezo kement ha ma zo red evid ma vezo savet an ti.

9. Ha mar deo red, e vezo roet dezo bemdez leueou hag ein, ha gevr e sakrifis-losk da Zoue an neñv hag ed, hag holen, ha gwin, hag eoul, hervez lidou ar veleien a zo e Jeruzalem, heb abeg ebed d'en em glemm.

10. Evid ma kinnigint sakrifisou da Zoue an neñv, ha ma pedint evid buhez ar roue hag e vibien.

11. Rag se em-eus gourhemennet, penaoz mar deu eur re da derri ar hemenn-ze, bezet tennet eun tamm koad euz e di, bezet lakaet en e zav, ha bezet eñ krouget outañ, ha bezet kroget en e di.

12. An Doue pehini en-deus lakaet e ano da chom amañ, dispennet an oll rouanteleziou, hag ar bobl a astenno he dorn evid enebi outañ, ha kas da get an ti Doue-ze a zo e Jeruzalem. Me, Darius, em-eus greet ar gourhemenn-ze, hag e fell din e ve sevenet gand preder.

¹⁷⁹ mar deo bet : hag-eñ eo bet

13. Tatanai eta, dug ar vro en tu all d'ar ster, ha Starbuzanai, hag o huzulierien, a zevenas gand preder kement en-doa gourhemennet ar roue Darius.

14. Hogen henaoured ar Iuzevien a zav an ti, ha pep tra a zeue da vad dezo, hervez diougan Aggeüs, ar profed, ha Zac'harias, mab Addo : hag i a laboure da zevel an ti, hervez gourhemenn Doue Izrael, ha gourhemenn Sirius, ha Darius, hag Artaksersez, roueed ar Bersied.

15. Hag i a beurzavas ti Doue an trede deiz euz a viz Adar a zo ar c'hwehved bloaz euz a ren ar roue Darius.

16. Neuze bugale Izrael, ar veleien hag al Levited, hag ar re all euz ar bobl pere a oa distroet euz an dezougadur, a reas sakrerez ti Doue gand levenez.

17. Hag i a ginnigas evid sakrerez ti Doue, kant leue, daou-hant tourh, pevarhant oan, daouzeg menn gavr evid pehed Izrael oll, hervez an niver euz a vreuriezu Izrael.

18. Hag ar veleien a oe lakaet en o reiziu, hag al Levited en o zroiou war servij Doue e Jeruzalem, evel ma eo skrivet e levr Moizez

19. Bugale Izrael pere a oa distroet euz an dezougadur, a reas ar Pask er pevarzegved deiz euz ar miz kenta.

20. Rag ar veleien hag al Levited a oa bet glannaet evel eun den hepken : hag i glan oll a lazas ar Pask evid oll vibien an dezougadur, evid o breudeur ar veleien, hag evito o-unan.

21. Ar re euz a vugale Izrael pere a oa distroet euz an dezougadur, hag ar re oll pere a oa en em rannet euz a zaotr poblou ar vro evid trei ganto, hag evid klaskoud an Aotrou, Doue Izrael, a zebras ar Pask.

22. Hag i a reas gouel ar bara dihoell e-pad seiz devez el levenez, o veza m'en-doa an Aotrou o laouennaet ha m'en-doa troet kalon roue an Asiried en o heñver, evid m'o skoazellfe da zevel ti an Aotrou, Doue Izrael.

VII. Pennad.

Esdras a zo kaset er Judea gand Artaksersez.

1. Hogen goude kement-se, e ren Artaksersez, roue ar Bersied, Esdras, mab Saraias, mab Azarias, mab Helsias,

2. Mab Sellum, mab Sadok, mab Ac'hitob,,

3. Mab Amarias, mab Azarias, mab Maraiol

4. Mab Zac'harias, mab Ozi, mab Bokki,

5. Mab Abisue, mab Finees, mab Eleazar, mab Aaron, beleg abaoe ar penn kenta,

6. Estras eta a bignas da Vabilon : skrivagner e oa, ha desket mad e lezenn Moizez, en-doa roet an Aotrou Doue da Izrael, hag ar roue a aotreas dezañ e houlen, o veza ma oa dorn an Aotrou Doue warnezañ.

7. Ha kalz euz a vugale Izrael, hag euz a vibien ar veleien, hag euz a vibien al Levited, hag euz ar ganerien, hag euz ar borzerien, hag euz an Natineed, a bignas da Jeruzalem, er seizved bloaz euz ar roue Artaksersez.

8. Hag i a zeuas da Jeruzalem er pempved miz, pehini a oa er seizved bloaz euz ar roue.

9. Rag en deiz kenta euz ar miz kenta e teraouas pigna euz a Vabilon, hag en deiz kenta euz ar pempved miz e teuas da Jeruzalem, o veza ma oa dorn mad e Zoue warnezañ.

10. Hag Esdras a aozas e galon, evid enklaskoud lezenn an Aotrou, hag evid seveni ha deski zn Izrael e gelennou hag e varnedigeziou.

11. Hogen setu skwer al lizer a reas ar roue Artaksersez da Esdras ar beleg, skrivagner desket-braz e geriou hag e kelennoù an Aotrou, hag en e lidou en Izrael.

12. Artaksersez, roue ar roueed, da Esdras ar beleg, skrivagner desket-braz e lezenn Doue an neñv, salud.

13. Gourhemennet em-eus penaoz piou bennag en em gavo em rouantelez euz a bobl Izrael, euz he beleien hag euz he Levited, hag a fell dezañ mond da Jeruzalem, ra'z ay ganez.

14. Rag kaset out gand ar roue ha gand e zeiz kuzulier, evid bizita ar Judea ha Jeruzalem hervez lezenn da Zoue, a zo en da zorn ;

15. Hag evid kas an arhant hag an aour a ginnig ar roue hag e guzulieren a galon vad da Zoue Izrael, pehini en-deus lakaet e dabernakl e Jeruzalem.

16. Kemer heb neb redi an oll arhant hag an oll aour a gavi e oll broviñs Babilon, hag a fello d'ar bobl da ginniga, hag a ginnigo ar veleien anezo o-unan, da di o Doue, a zo e Jeruzalem.

17. Ha pren gand preder gand an arhant-se leueou, tourhed, ein, ha sakrifisou ha braoued kinnig, ha kinnig anezo war aoter templ ho Toue, a zo e Jeruzalem.

18. Hogen mar fell dit ha d'az preudeur ober eun dra bennag all gand an dilerh euz an arhant hag euz an aour, grit hervez youl ho Toue.

19. Kas ivez da Jeruzalem, ha dirag da Zoue, al listri a zo bet roet dit evid servij ti da Zoue.

20. Hogen mar deo red dit ober eun dispign bennag all evid ti da Zoue, e vezo roet dit euz a deñzor hag euz a leve ar roue.

21. Hag euz va espern va-unan, Me, Artaksersez, roue, a gemennan hag a hourhemennan da oll deñzorerien arh ar rouantelez, pere a zo en tu all d'ar ster, ma roint heb dale ebed da Esdras, ar beleg, skrivagner lezenn Doue an neñv, kement a houlenno diganeoh.

22. Beteg kant talant arhant, ha beteg kant korus gwiniz¹⁸⁰, ha beteg kant bat gwin¹⁸¹, ha beteg kant kat eoul¹⁸², hag holen divent.

23. Ra vezo kaset buan da di Doue an neñv, kement ha ma vezo red evid lid Doue an neñv ; gand aon na zavje droug ennañ ouz rouantelez ar roue hag e vibien.

24. Rei a reom ivez da anaoud deoh penaoz ne hellot ket sevel gwiriou, na tellou, na danvez, war ar veleien, war al Levited, war ar ganerien, war ar borzerien, war an Natineed, ha war servijerien ti an Doue-ze.

25. Ha te, Esdras, hervez furnez da Zoue a zo en da zorn, laka barnerien ha renerien, evid barna an oll bobl a zo en tu all d'ar ster, da lavaroud eo ar re a anavez lezenn da Zoue : desk ivez heb harz ar re ziuizieg.

26. Ha piou bennag na zeveno ket gand preder lezenn da Zoue ha lezenn ar roue, a vezo barnet pe d'ar maro, pe d'an harlu, pe da eur gwir war e vadou, pe c'hoaz d'ar vah.

¹⁸⁰ korus gwiniz : muzul. Red e vefe bet skriva : korusad gwiniz.

¹⁸¹ kant bat gwin : idem.

¹⁸² kant kat eoul : idem.

27. Benniget ra vezo an Aotrou, Doue on tadou, pehini en-deus lakaet kement-se e kalon ar roue, evid enori ti an Aotrou a zo e Jeruzalem.

28. Ha pehini en-deus va lakaet da gavoud trugarez dirag ar roue hag e guzulieren, ha dirag ar re halloudusa euz a briñsed ar roue : ha me, kreñvaet gand dorn an Aotrou va Doue a oa warnon, em-eus strollet priñsed Izrael, evid o lakaad da bigna ganen.

VIII. Pennad.

Niverer¹⁸³ a re a zistroas gand Esdras euz a Vabilon da Jeruzalem.

1. Setu amañ anoïou priñsed an tadou, ha niver ar re a zo pignet ganen euz a Vabilon dindan ren ar roue Artaksersez.

2. Euz a vibien Finees, Gersom. Euz a vibien Itamar, Daniel. Euz a vibien David, Hattus.

3. Euz a vibien Sec'henias, mibien Faro, Zac'harias ; ha gantañ e oe niveret kant den hag hanter-kant.

4. Euz a vibien Fahat-Moab, Elioenai, mab Zarehe ; ha gantañ daou-hant den.

5. Euz a vibien Sec'henias, mab Ezech'hïel ; ha gantañ tri-hant den.

6. Euz a vibien Adan, Ahed, mab Jonatan ; ha gantañ hanter-kant den.

7. Euz a vibien Alam, Isaias, mab Atalias ; ha gantañ deg den ha tri-ugent.

8. Euz a vibien Safatias, Zebedia, mab Michael ; ha gantañ pevar-ugent den.

9. Euz a vibien Joab, Obedia, mab Jahiel : ha gantañ daou-hant den ha triweh.

10. Euz a vibien Selomit, mab Josfias : ha gantañ eiz-ugent den.

11. Euz a vibien Bebai, Zac'harias, mab Bebai ; ha gantañ eiz den warn-ugent.

12. Euz a vibien Azgad, Juhanan, mab Ekketan ; ha gantañ deg den ha kant.

13. Euz a vibien Adonikam, pere a oa ar re ziweza ; setu amañ o anoïou : Elifelet, ha Jehiel, ha Samaias ; ha ganto tri-ugent den.

14. Euz a vibien Begui, Utai ha Zac'hur ; ha ganto deg den ha tri-ugent.

15. Hogen me o strollas war harz ar ster a red etrezeg hini Ahava, hag e chomjom eno a-hed tri devez ; ha me a glaskas mibien Levi e-touez ar bobl hag ar veleien, ha ne gavis eno hini ebed.

16. Kas a ris eta Eliezer, hag Ariel, ha Semeias, hag Elnatan, ha Jarib, hag eun Elnatan all, ha Zac'harias, ha Mosoliam ; a oa da briñsed ; ha Jolarik, hag Elnatan, a oa leun a furnez.

17. Ha me o hasas etrezeg Eddo, pehini eo ar henta el leh anvet Kasfia, hag e likiis en o genou ar gerïou a dleent da lavaroud da Eddo ha d'e vreudeur an Natineed, e Kasfia, evid ma tegasjent deom servijerien ti on Doue.

18. Hag i a zegasas deom, dre zorn on Doue a oa mad en o heñver, eun den desket-braz euz a vibien Moholi, mab Levi, mab Izrael, ha Sarabia, hag e vibien hag e vreudeur ; triweh den.

19. Hag Hasabia, ha gantañ Isaias euz a vibien Merari, hag e vreudeur hag e vibien ; ugent den :

20. Hag euz an Natineed, en-doa roet David hag ar briñsed evid servij al Levited, unneg-kant Natinead ; oll e oant galvet dre o anoïou.

¹⁸³ : Bez' e niverer.

21. Hag eno war aod ster Ahava eh embannis eur yun, evid ma en em hlaharfem dirag an Aotrou on Doue, ha ma houlenfem digantañ eun hent eeun evidom, hag evid or mibien, hag evid on oll dra.

22. Rag mez em-boa da houlen digand ar roue e skoazell a varheien, evid on diwalloud diouz on enebour en hent, o veza m'or-boa lavaret d'ar roue : Dorn on Doue a zo war ar re oll a glask anezañ a galon vad ; hag e veli, hag e halloud, hag e froudenn war ar re oll a zilez anezañ.

23. Ni eta a yunas hag a bedas on Doue evid se ; ha pep tra a zeuas da vad deom.

24. Ha me a rannas daouzeg euz a briñsed ar veleien, Sarabia, hag Hasabia, ha ganto deg euz o breudeur ;

25. Ha me a bouezas dirazo an arhant, hag an aour, hag al listri sakr euz a di on Doue, a oa bet kinniget gand ar roue, hag e guzulieren, hag e briñsed, hag ar re oll euz a Izrael en em gavas eno.

26. Poueza a ris en o daouarn c'hweh-kant talant arhant hag hanter-kant, kant lestr arhant, ha kant talant aour ;

27. Hga ugent kop aour a boueze mil dram, ha daou lestr arem, ker melen ha ker skeduz hag an aour.

28. Hag e liviris dezo : C'hwi eo sent an Aotrou, hag al listri-ze a zo sant¹⁸⁴, evel an arhant hag an aour a zo bet kinniget a youl vad d'an Aotrou, Doue on tadou.

29. Evesait ha mirit o, ken n'ho-pezo o fouezet dirag priñsed ar veleien, hag al Levited, ha duged tiadou Izrael e Jeruzalem, evid o lakaad e teñzor ti an Aotrou.

30. Hogen ar veleien hag al Levited a zegemeras an arhant, hag an aour, hag al listri en o fouez, hag o dougas da Jeruzalem e ti on Doue.

31. Mond a rejom eta euz a aod ster Ahava en daouzegved deiz euz ar miz kenta, evid mond da Jeruzalem ; ha dorn on Doue a zo savet warnom, hag en-deus on dieubet euz a zorn on enebour, hag euz an hini a aoz spiou deom en hent.

32. Ha ni a zeuas da Jeruzalem, hg a chomas eno a-hed tri deiz.

33. Hogen er pevare deiz e oe pouezet an arhant, hag an aour, hag al listri e ti on Doue, dre zorn Meremot, mab Urias ar beleg ; ha gantañ edo Eleazar, mab Finees, hag ivez Jozabet, mab Josue, ha Noadaia, mab Hennoi, al Levited,

34. Hervez an niver hag ar pouez euz a bep hini ; ha neuze e oe diskrivet pouez pep hini.

35. Mibien an dezougadur, pere a oa deuet euz ar sklaverez, a ginnigas e sakrifis-losk da Zoue Izrael, daouzeg leue evid oll bobl Izrael, c'hwezeg tourh ha pevar-ugent, seiteg oan ha tri-ugent, daouzeg bouh evid ar pehed ; oll e sakrifis-losk d'an Aotrou.

36. Rei a rejont kemennou ar roue d'ar briñsed a oa war e dro, ha d'ar renerien a oa en tu all d'ar ster ; hag ar re-mañ a gennerzas¹⁸⁵ ar bobl ha ti Doue.

IX. Pennad.

Esdras, o klevoud penaoz o-doa ar Iuzevien kemeret gwrazez e-touez an diavêzidi,

¹⁸⁴ sant : santel.

¹⁸⁵ gennerzas : enoras

a rog e zillad.

1. Hogen pa oe tremenet kement-se, ar briñsed a zeuas d'am havoud, o lavaroud : Pobl Izrael, ar veleien hag al Levited n'int ket en em rannet diouz poblou ar vro-mañ, ha diouz o fallagriezou ; da lavaroud eo, diouz ar Hananeed, hag an Heteed, hag ar Ferezeed, hag ar Jebuseed, hag an Ammonited, hag ar Voabited, hag an Ejiptianed, hag an Amorreed ;

2. Rag kemeret o-deus euz o merhed evito hag evid o mibien ; ha kemmesket o-deus ar ouenn zantel gand pobl ar vro ; ha dorn ar briñsed hag ar renerien a zo en em roet da genta d'ar gwall-ze.

3. Pa glevis ar geriou-ze, e rogis va mantell ha va zae, e sachis war va bleo ha war va baro, hag eh azezis galharet-braz.

4. Ar re oll pere a zouje ger Doue Izrael, en em strollas war-dro din, en abeg da wall ar re a oa deuet euz ar sklaverez, ha me a chomas azezet ha glaharet-braz beteg sakrifis an abardaez.

5. Ha pa ginniged sakrifis an abardaez, e savis euz va glahar, ha gand va mantell ha va zae roget, en em daolis war va daoulin, hag eh astennis va daouarn etrezeg an Aotrou, va Doue.

6. Hag e liviris : Va Doue, mez em-eus , ha ruzia a ran o sevel va daoulagad etrezeg ennout, o veza ma eo paotet or fallagriezou dreist or penn, ha ma eo savet or gwallou beteg an neñv,

7. Abaoe deziou on tadou ; ha ni ivez on-unan on-eus gwall behet betevremañ, hag en or fallagriezou om bet lakaet ni, hag or roueed, hag or beleien, etre daouarn roueed ar broadou, ha roet d'ar hleze, ha d'ar sklaverez, ha d'ar gwasterez, ha d'ar vez, evel ma om c'hoaz hirio.

8. Ha bremañ an Aotrou, on Doue, en-deus selaouet eun nebeud hag evid eun amzer ouz or pedenn, evid lezel ganeom an dilerh a zo chomet, evid rei deom alhwez e leh santel ; evid ma sklêrraje on Doue on daoulagad, ha ma roje deom eun nebeud buhez en or sklaverez ;

9. Rag sklaved om, hag on Doue n'en-deus ket on dilezet en or sklaverez ; hogen degaset en-deus warnom trugarez e-keñver roue ar Bersied, evid ma roje deom ar vuhez, ma savje ti on Doue, hag e lehiou dilezet, ha ma roje deom eun degemer e Juda hag e Jeruzalem.

10. Ha bremañ petra a livirim-ni, o ! on Doue, goude kement-se ? Pa on-eus torret da hourhemennou,

11. Eh-eus roet deom dre henou ar brofeded da zervijerien, o lavaroud : An douar e pehini oh deuet evid chom ennañ, 'zo eun douar dihlan, evel ma eo dihlan ar poblou hag an douarou all ; ha leun eo gand ar saotrou ha gand ar fallagriezou a bere eo goloet ganto euz an eil penn d'egile.

12. Rag se eta na roit ket ho merhed d'o mibien-i, ha na gemerit ket o merhed evid ho mibien-c'hwi, ha na glaskit biken o feoh, nag o eurvad ; evid ma kreñvaot ha ma tebrot ar pezh a zo mad en douar-ze, ha m'ho-pezo ho mibien da hered ennañ da viken.

13. Ha goude an oll zrougou a zo bet c'hoarvezet ganeom en abeg d'or gwalloberiou ha d'or pehejou braz, te, on Doue, eh-eus on dieubet euz or fallagriez, hag eh-eus roet deom ar wellaenn, veel bremañ :

14. Evid na zistroim ket d'an droug, ha na dorrin ket da hourhemennou, ha n'en em unan ket dre zimeziou gand ar poblou a ra ar fallagriezou-ze. Ha braz

a-walh eo da vuanegez ouzom evid ma or holli a-grenn, heb lezel eun dilerh ebed evid e zavetei.

15. Aotrou, Doue Izrael, te a zo gwirion ; pa om bet dilezet evid beza dieubet evel ma om hirio. Setu emañ dirazout en or gwall ; rag goude kement-se n'heller ket sevel dirazout.

X. Pennad.

Kas a reer kuit ar gwrazez a-ziavêz bro.

1. Pa bede Esdras en doare-ze, pa leñve, pa ouele, pa oa gourvezet dirag templ Doue, e teuas euz a Izrael war e dro eur strollad braz a wazed, a verhed, hag a vugale ; hag ar bobl a ouele doureg.

2. Neuze Sec'hniat, mab Jehiel, euz a vibien Elam, a lavaras da Esdras : Ni on-eus kemeret gwrazez e-touez ar poblou a-ziavêz ; bremañ, ma ez eus pinijenn en Izrael diwar-benn kement-se,

3. Groom kevredigez gand an Aotrou on Doue ; kasom kuit an oll wragez-se, hag ar re a zo ganet diouto, hervez youl an Aotrou hag ar re a zouj kemennou an Aotrou on Doue ; ha bezet greet hervez al lezenn.

4. Sav : dit eo da hourhemenni ; ha ni a vezo ganez ; en em greñva, ha gra.

5. Esdras eta a zavas, hag a lakaas oll briñsed ar veleien hag al Levited, hag oll boblou Izrael, da doui dezañ e rajent diouz ar ger-ze. Hag i a douas.

6. Neuze Esdras a zavas euz a-zirag ti Doue, hag a yeas da gambr Johanan, mab Efiatib ; ha pa oe eet e-barz, ne zebras ket a vara, ha ne evas ket a zour ; rag gouela a ree pehed ar re a oa deuet euz ar sklaverez.

7. Hag embannet e eo e Juda hag e Jeruzalem, ma en em strollje e Jeruzalem oll vibien an dezougadur :

8. Ha penaoz piou bennag na vije ket deuet a-benn tri deiz, hervez kuzul ar briñsed hag an henaoured, a vije tennet digantañ e oll dra, hag e vije-eñ distaolet euz a strollad ar re a oa deuet euz an dezougadur.

9. Oll dud Juda ha Benjamin en em strollas eta e Jeruzalem a-benn tri deiz, en naved miz, en ugentved deiz euz ar miz ; hag an oll bobl a azezas war leurenn ti Doue, hag i o krena en abeg d'o fehed, ha d'ar glao a goueze.

10. Hag Esdras, ar beleg, a zavas hag a lavaras dezo : C'hwi hoh-eus torret al lezenn, hag hoh-eus kemeret gwrazez a-ziavêz, evid gwasaad pehed Izrael.

11. Ha bremañ meulit an Aotrou, Doue ho tadou, ha grit ar pezh a zo hetuz dezañ, ha pellait diouz poblou an douar ha diouz ar gwrazez a-ziavêz.

12. Hag an oll bobl a respontas, hag a lavaras gand eur vouez kreñv : Ra vezo greet en or heñver evel ma eh-eus lavaret.

13. Hogen o veza ma eo paot ar bobl, ma eo amzer ar glao, ha na hellom ket chom er-mêz, ha na eo ket labour eun deiz na daou (rag braz eo or pehed),

14. Ra vezo lakaet priñsed e-touez an oll bobl, ha kement hini ahanom en-deus kemeret eur wreg a-ziavêz, deuet en deziou merket, ha ganto an henaoured hag ar varnerien euz a bep kêr, ken na vezo distaolet buanegez on Doue diwarnom en abeg d'ar pehed-se.

15. Jonatan eta, mab Azahel, ha Jaasia, mab Tekue, a oe lakaet war gement-se, ha Mesollam ha Sebatat, al Levited, a gennerzas anezo.

16. Hag ar re a oa deuet euz an dezougadur a reas evel-se. Hag Esdras ar beleg, ha priñsed an tiadou a yeas e tiez o zadou, pep hini hervez e ano, hag eh azezjont en deiz kenta euz an degved miz evid klaskoud an dra.

17. Hag an niver euz ar re o-doa kemeret gwrazez a-ziavêz a oe peurbreet an deiz kenta euz ar miz kenta.

18. Hag e oe kavet euz a vibien ar veleien o-doa kemeret gwrazez a-ziavêz : euz a vibien Josue, mab Josedek, hag e vreudeur, Maasia, hag Eliezer, ha Jarib, ha Godolta.

19. Hag i a roas o daouarn evid kas kuit o gwrazez, hag evid kinniga eun tourh euz an tropell evid o gwall.

20. Hag euz a vibien Emmer : Hanani ha Zebedia.

21. Hag euz a vibien Harim : Maasia, hag Elia, ha Semeia, ha Jehiel, hag Ozias.

22. Hag euz a vibien Fesjur ; Elioenai, Maasia, Ismael, Natanad, Jozabed, hag Elasa.

23. Hag euz a vibien al Levited :Jozabed, ha Semei, ha Selaia (hennez eo Kalita), Fataia, Juda hag Eliezer,

24. Hag euz ar ganerien :Eliasib ; hag euz ar borzerien : Sellum ha Telem, hag Uri.

25. Hag euz a Izrael : euz a vibien Faros ; Remeia, ha Jezia, ha Melc'hia, ha Miamin, hag Eliezer, ha Melc'hia, ha Banea.

26. Hag euz a vibien Elam : Matania, Zac'harias, ha Jehiel, hag Abdi, ha Jerimot, hag Elia.

27. Hag euz a vibien Zetua ; Elioenai, Eliasib, Matania, ha Jerimot, ha Zabad, hag Aziza.

28. Hag euz a vibien Bebai Johanan, Hanania, Zabbai, Atalai.

29. Hag euz a vibien Hani : Mosallam, ha Melloc'h, hag Adaia, Jarub ha Saal, ha Ramot.

30. Hag euz a vibien Fahat-Moab : Edna, ha Chalal, Banaias, ha Maasias, Matanaias , Beseleel, Bennui, ha Manase.

31. Hag euz a vibien Herem : Eliezer, Josue, Melc'hias, Semeias, Simeon,

32. Benjamin, Maloc'h, Samarias.

33. Hag euz a vibien Hasom :Matanai, Matata, zabad, Elifelet, Jermat, Manase, Semei.

34. Hag euz a vibien Bani : Maaddi, Amram, ha Vel.

35. Baneas, ha Badaias, Cheliau,

36. Vania, Mazimut, hag Eliasib,

37. Matanias, Matanai, ha Jasi,

38. Ha Bani, ha Bennui, Semei,

39. Ha Salmias, ha Natan, hag Adaias.

40. Ha Mec'hnedebai, Sisai, Sarai,

41. Ezrel, ha Selemian, Semeria,

42. Sellum, Amaria, Jozef,

43. Euz a vibien Nebo : Jehiel, Matatias, Zabad, Zabina Jeddu, ah Joel, ha Nanaia.

44. Ar re-ze oll o-doa kemeret gwrazez a-ziavêz, ha lod euz ar gwrazez-se o-doa ganet bugale.

LEVR NEHEMIAS

AN EIL EUZ A ESDRAS

III. Pennad

Glahar Nehemias, e bedenn da Zoue.

1. Geriou Nehemias, mab Helc'hias, Ha c'hoarvezet eo e miz Kasleu, en ugentved bloaz, pa edon e kastell Susi.
2. Hanani , unan euz va breudeur, a zeuas, eñ ha tud euz ar Juda ; ha me a houlennas kelou diganto euz ar Iuzevien a oa chomet goude ar sklaverez, hag a oa c'haoz beo, ha diwar-benn Jeruzalem.
3. Hag i a lavaras din : Ar re a zo chomet goude ar sklaverez, hag a chom c'hoaz er vro, a zo en eur hlahar vraz, hag en eun dismegañs vraz : mur Jeruzalem a zo freuzet, hag he ferzier a zo bet devet gand an tan.
4. Pa glevis ar geriou-ze, eh azezis, e ouelis, hag e ris kañv e-pad meur a zevez ; yuna a ris, hag e pedis dirag Doue an neñv.
5. Hag e liviris : Me az ped, Aotrou Doue an neñv, te pehini a zo braz hag estlammuz, te pehini a vir da gevredigez ha da drugarez e-keñver ar re az kar hag a vir da hourhemennou ;
6. Ra zelaouo da ziskouarn, ha ra zello da zaoulagad, evid ma klevi pedenn da zervijer, ar bedenn a ran hirio dirazout noz-deiz, evid bugale Izrael da zervijerien. Me a anavez ar pehejou o-deus greet bugale Izrael en da eneb ; me ha ti va zad on-eus pehet.
7. Touellet om bet gand an didalvedigez, ha n'on-eus ket mirit da hourhemennou, ha da lidou, ha da varnedigeziou, evel ma eh-eus o gourhemennet da Voizez, da zervijer.
8. Az-pezo koun euz ar ger eh-eus roet da Voizez, da zervijer, o lavaroud : Pa ho-pezo torret va lezenn, me ho skigno e-mesk ar poblou.
9. Ha mar distroit etrezeg ennon, ha ma mirit va helennou, ha mar sevenit anezo, ha pa veh kaset beteg penn ar bed, me ho stollo ahano, hag ho tegaso d'al leh em-eus dilennet evid ma chomje eno va ano.
10. Hag ar re-mañ eo da zervijerien, ha da bobl, eh-eus dasprenet gand da halloud braz, ha gand da zorn kreñv.
11. Me az ped, Aotrou, bezet evezieg da skouarn da bedenn da zervijer, ha da bedenn da zervijerien, pere a zouj da ano ; ha ren hirio da zervijer, ha ro dezañ trugarez dirag an den-ze : rag me a oa koper ar roue.

II. Pennad.

Nehemias a zistro da Jeruzalem, hag a laka da zevel he muriou.

12. Hogen e miz Nisan, en unnegved bloaz euz ar roue Artakserssez, e oe kaset gwin dirag ar roue : ha me a gemeras ar gwin, hag her roas d'ar roue ; ha me a oa evel eun den doaniet dirazañ.

13. Hag ar roue a lavaras din : Perag eo-eñ ken trist da zremm, pa n'az kwelan ket klañv ? N'eo ket kement-se en aner ; hogen ne ouzon ket petra a zo en da galon. Ha me em-boe eun aon vraz-meurbed.

14. Hag e liviris d'ar roue : O ! roue, bev da viken : perag ne ve ket trist va dremm, pa eo didud ar gêr m'ema enni beziou va zadou, ha pa eo bet devet he ferzier gand an tan.

15. Hag ar roue a lavaras din : Petra a houlennez-te diganen ? Hga e pedis Doue an neñv ;

16. Hag e liviris d'ar roue : Mar kav mad ar roue, ha mar deo hetuz da zervijer dirazout, va has d'ar Judea, da gêr beziou va zadou, evid ma savin anezi a-nevez.

17. Hag ar roue a lavaras din, hag ivez ar rouanez pehini a oa azezet en e gichenn : Pegeid amzer e vezi-te en hent, ha peur e tistroi ? Hag ar roue her havas mad, hag a gasas ahanon, goude m'am-boe merket dezañ an amzer.

18. Ha me a lavaras c'hoaz d'ar roue : Mar kav mad ar roue, roet din liziri evid an duged euz ar vro en tu all d'ar ster, evid ma lezint ahanon da dremenoud, ken na vezin eet er Judea :

19. Hag ivez eul lizer evid Asaf, diwaller koad ar roue, ma roy din koad evid ma hellin goloi doriou touriou an ti, ha muriou kêr, hag an ti e pehini ez in. Hag ar roue hen aotreas din, o veza ma oa mad dorn va Doue warnon.

20. Ha me a yeas da gavoud duged ar vro en tu all d'ar ster, hag e rois dezo liziri ar roue. Hogen ar roue en-doa kaset ganen priñsed, tud a-vrezel, ha marheien.

21. Pa glevas kement-se Sanaballat an Horonitad, ha Tobias ar servijer hag an Ammonitad, e oent glaharet-braz, o veza ma oa deuet eun den a glaske eurvad bugale Izrael.

22. Ha me a yeas da Jeruzalem, hag a chomas eno a-hed tri devez.

23. Ha me a zavas a-hed an noz, ha nebeud a dud ganen ; ha ne liviris da zen ar pez en-doa lakaet an Aotrou em penn da ober e-keñver Jeruzalem : ha ne oa eno marh ebed ganen, nemed an hini war pehini e oan azezet.

24. Ha me a yeas 'hed an noz dre zor an draonienn, ha dirag feunteun an naer, hag e-tal porz an teil, hag e sellis ouz mur Jeruzalem a oa diskaret, hag ouz he ferzier a oa devet gand an tan.

25. Neuze ez is ahano da borz ar feunteun, ha da zan dour ar roue ; ha ne oa ket eno a leh evid treuzi gand ar marh war pehini edon azezet.

26. Hag e pignis, en-dra ma oa c'hoaz noz, dre ar froud, hag e sellis ouz ar vur, hag e teuis adarre da borz an draonienn, hag e tistrois.

27. Koulskoude pennou kêr ne ouient ket peleh e oan eet, na petra a reen ; ha beteg neuze n'em-boea disklêriet netra d'ar Iuzevien, na d'ar veleien, na d'ar re vraz, na da bennou kêr, na d'ar re all pere a rene al labour :

28. Hag e liviris dezo : C'hwi a anavez ar hlahar e pehini emaom, dre an abeg ma eo dizud Jeruzalem, ha ma eo bet devet he ferzier gand an tan : deuit, ha savom a-nevez muriou Jeruzalem, evid na vezim er vezegez.

29. Ha me a roas da anaoud dezo penaoz dorn va Doue a oa bet mad em heñver, hag ar geriou en-doa lavaret ar roue din, hag e liviris dezo : Deom, ha savom a-nevez ar muriou. Hag o daouarn a greñvaas er mad.

30. Pa glevas kement-se Sanaballat, an Honoritad, ha Tobias ar servijer, an Ammonitad, ha Gosem an Arabiad, e rejont goap ahanom, e tisprizjont ahanom, hag e leverjont : Petra a rit-hu aze ? Ha ne zispahit-hu ket ouz ar roue ?

31. Ha me a respontas hag a lavaras dezo : Doue an neñv eo a gennerz ahanom, ha ni a zo e zervijerien ; deom, ha savom a-nevez ar muriou ; hogen n'hoh-eus na lod, na gwir, na koun e Jeruzalem.

III. Pennad.

Nivererez ar re a zao a-nevez muriou Jeruzalem.

1. Neuze Eliasib, ar beleg-braz, a zavas, hag e vreudeur ar veleien, hag e savjont porz an deñved ; e zantellaad a rejont, hag e savjont e berzier, o santellaad anezo, beteg tour ar hant ilinad, beteg tour Hananeel.

2. Ha war harz dezañ e labouras mibien Jeriko ; hag ivez en tu all Zac'har, mab Amri.

3. Hogen mibien Asnaa a zavas porz ar pesked : e dei e rejont hag e lakajont outañ stalafiou, ha potennou, ha barrou. Ha Marimut, mab Urias, mab Akkus, a labouras en o hichenn.

4. Hag en e gichenn e labouras Mosollam, mab Barac'hias, mab Besezebel ; hag en o hichenn, Sadok, mab Baana ;

5. Ha mibien Tekus a labouras e-kichenn ar re-mañ ; hogen ar re vraz anezo ne fellas ket dezo plega o gouzoug da labour o Aotrou :

6. Ha Joiada, mab Fasea, ha Mosollam, mab Besodia, a zavas ar porz koz : e dei a rejont, hag e lakajont outañ stalafiou, ha potennou, ha barrou.

7. Ha Meltias ar Gabaonit, ha Iadon ar Meronalit, pere a oa euz a Habaon hag euz a Vasfa, a labouras e-kichenn ar re-mañ, dirag ti ar rener a oa en tu all d'ar ster.

8. Hag en e gichenn e labouras Eziel, mab Arsia, an orfeber ; hag e-kichenn hemañ e labouras Ananias, mab eul louzaouer, hag i a lezas Jeruzalem beteg mur ar ru vraz¹⁸⁶.

9. Hag en e gichenn e labouras Rafaia, mab Hur, priñs eur pann euz a Jeruzalem.

10. Hag en e gichenn e labouras Jedaia, mab Haromaf, hag e-keñver e di ; hag e-kichenn hemañ e labouras Hattus, mab Hasebonias ;

11. Mec'hias, mab Herem, hag Hasub, mab Fahat-Moab, a zavas an hanter euz a eur ru, ha tour ar forniou.

12. Hag e-kichenn hemañ e labouras Sellum, mab Alohez, priñs eun hanter pann euz a Jeruzalem, eñ hag e verhed.

13. Hanun ha tad Zanoë a zavas porz an draonienn ; ha sevel a rejont hag e lakajont outañ stalafiou, ha potennou, ha barrou, hag ivez mil ilnad a vur beteg porz an teil.

14. Melc'hias, mab Rec'hab, priñs euz a bann Betac'haram, a zavas porz an teil ; e zevel a reas hag e lakaas outañ stalafiou, ha potennou, ha barrou.

15. Sellum, mab Kolhoza, priñs pann Masfa, a zavas porz ar feunteun : e zevel a reas, e dei a reas hag e lakaas outañ stalafiou, ha potennou, ha barrou, hag ivez

¹⁸⁶ hag i a lezas Jeruzalem beteg mur ar ru vraz : ?

muriou al lenn anvet Siloe, a-hed garz ar roue beteg an dereziou dre bere e tiskenner euz a gêr David.

16. Goude hemañ e labouras Nebemias, mab Azbok, priñs an hanter euz a bann Betsur, beteg war-harz bez David, ha beteg al lenn a oa bet greet gand eul labour braz, ha beteg ti ar hreñvou¹⁸⁷.

17. Goude hemañ e labouras al Levited, ha Rehum, mab Benni : ha goude hemañ Hasebias, priñs hanter pann Seila, en e bann e-unan.

18. Goude hemañ e labouras e vreudeur, ha Bavai, mab Enadad, priñs hanter pann Seila.

19. Hag en e gichenn e labouras Aser, mab Josue, priñs Masfa, hag e savas eun eil ment¹⁸⁸, rag eneb da greh ar horn kreñv.

20. Goude hemañ e labouras Barac'h, mb Zac'hai, war eun eil rann, adaleg ar horn, beteg dor ti Eliasib, ar beleg-braz.

21. Goude hemañ e labouras Merimut, mab Urias, mab Hakkus, war eun eil rann, adaleg dor ti Eliasib, beteg penn ti Eliasib.

22. Goude hemañ e labouras ar veleien, pere a oa e kompezennou ar Jourdan.

23. Goude hemañ e labouras Benjamin ha Hasub e-keñver o zi : ha goude hemañ e labouras Azrias, mab Masias, mab Ananias, e-keñver e di.

24. Goude hemañ e labouras Bengui, mab Henadada, en eil ment, adaleg ti Azarias beteg an distro, ha beteg ar hogn.

25. Falel, mab Ozi, ouz an distro hag an tour a zav euz a di uhel ar roue, da lavaroud eo a-hed porched ar vah. Goude hemañ Fadaia, mab Faros.

26. Hogen an Natineed a chome e Ofel beteg rag-eneb da borz an doureier, war-zu ar zav-heol, ha beteg an tour pehini a oa war zivêz.

27. Goude hemañ e labouras mibien Tekua eun eil ment dirag, adaleg an tour braz a oa war zivêz, beteg mur an templ.

28. Hogen ar veleien a labouras ouz kreh, adaleg porz ar hezeg, pep hini dirag e di.

29. Goude ar re-mañ e labouras Sadok, mab Emmer, dirag e di. Ha goude hemañ e labouras Semaia, mab Sec'henias, diwaller porz ar zav-heol.

30. Goude hemañ e labouras Hanania, mab Selemias, hag Hanun, c'hwehved mab Selei, eun eil ment : ha goude hemañ e labouras Mosollamm, mab Barac'hias, dirag an orfeber, beteg ti an Natineed hag an dakonerien, war-harz porz ar varnerien, ha beteg kambr ar hogn.

31. Hag a-hed kambr ar hogn, hag ouz porz an tropell, e labouras an orfeberien hag ar varhadourien.

IV. Pennad.

Enebourien ar Iuzevien a fell dezo miroud outo na zavjent a-nevez Jeruzalem.

1. Hogen pa glevas Sanaballat penaoz e savem ar vur a-nevez, e savas droug braz ennañ ; hag en e daerded, e reas goab euz ar Iuzevien.

2. Hag e lavaras dirag e vreudeur, ha dirag eul lod braz euz a Zamaritaned : Petra a ra ar goz Iuzevien-ze ? Hag o lezel a ray ar poblou da ober ? Hag i a ray o

¹⁸⁷ ar hreñvou : ar re greñv.

¹⁸⁸ eun eil ment : eun darn all euz ar vur.

zakrifisou, hag o feurhray en eun devez ? Hag i a hello laboura gand mein, a zo bet lakaet gand an tan en eur bern ludu ?

3. Ha Tobias an Ammoniad, a oa tost dezañ, a lavaras : Labourent ; mar deu eul louarn, e lammo dreist o mur vein.

4. Selaou, on Doue, rag goab a reer ahanom ; tro an dismegañs war o fenn, ha laka anezo da veza goapaet e douar o sklaverez.

5. Na holo ket o fallagriez, ha na vezo ket lamet o fehed a-zirag da zremm, o veza ma o-deus greet goab euz al labourerien.

6. Evl-se eh azsavjom ar vur, hag eh aozajom anezi oll beteg an hanter ; ha kalon ar bobl en em gentraouas d'al labour.

7. Hogen pa glevas Sanaballat, ha Tobias, hag an Arabied, hag an Ammonited, hag an Azotied, penaoz e ao serret gouli mur Jeruzalem, ha penaoz ez edod oh aoza an difreuzou, e savas eun droug braz enno.

8. Hag i en em strollas kevred evid dond da stourmi ouz Jeruzalem, hag aoza spiou deom.

9. Neuze e pedjom on Doue, hag e lakajom gwarded war ar vur noz-deiz evid enebi outo.

10. Hogen Judas a lavaras : An dougerien a zo skuiz ha kalz a dud a zo ; hag evel-se ne hellim ket sevel ar vur.

11. Hag on enebourien a lavaras : Na ouzent ha na glevant netra, ken na zeuim en o mesk, hag e lazim anezo, hag e lakaim al labour da ehana.

12. Hogen ar Iuzevien pere a chome e-touez an dud-se, o veza deuet, hag o veza lavaret kement-se deom deg gwech, euz an oll lehiou euz a bere e oant deuet etrezeg ennom ;

13. E likiis ar bobl dre renkad a-hed hag a-dreñv d'ar vur, gand o hlezeier, hag o goafiou, hag o gwaregou.

14. Ha goude beza evesaet mad, e savis, hag e liviris d'ar re vraz, ha d'ar renerien, ha d'ar re all euz ar bobl : Na spontit ket razo ; ho-pezet koun penaoz eo braz ha galloudeg an Aotrou : ha stourmit evid ho preudeur, evid ho mibien, evid ho merhed, evid ho krwagez, hag evid ho tiez.

15. Hogen pa glevas on enebourien penaoz e oa bet diskuliet kement-se deom, Doue a vevezas o dezo. Hag e tistrojom oll d'ar muriou, pep hini d'e labour.

16. Hag adaleg an deiz-se an hanter euz an dud yaouank en em roe d'al labour, hag an hanter all a oa dare d'ar brezel, gand o goafiou, o zirennou, o gwaregou, hag o harnezou, hag o friñsed war o lerh e oll di Juda.

17. Ar re a zave ar vur, hag ar re a zouge ar behiou, hag ar re a garge anezo, a ree o labour gand eun dorn, hag a zouge o hleze gand an dorn all :

18. Hag ar re oll a laboure, a zouge o hleze ouz o gouriz : hag i a laboure, hag a zone ar horn-boud dirazon.

19. Ha me a lavaras d'ar re vraz, ha d'ar renerien, ha d'ar re all euz ar bobl : Eul labour braz eo hag ehon, ha ni a zo amañ a-hed ar vur pell an eil diouz egile.

20. E pe leh bennag ma klevot son ar horn-boud, redit di etrezeg ennom : on Doue a stourmo evidom.

21. Hogen ni, greom al labour : hag an hanter ahanom douget ar goaf, adaleg goulou deiz beteg ma savo ar stered.

22. En amzer-ze e liviris ivez d'ar bobl : chomet pep hini gand e baotr e-kreiz Jeruzalem, ma hellim laboura noz-deiz pep hini d'e dro.

23. E-keñver me ha va breudeur, ha va faotred, hag ar warded a oa war va lerh, na zilezem ket on dillad, nemed evid en em walhi.

V. Pennad.

Aliou Nehemias d'ar re binvidig.

1. Neuze ar bobl, hag o gwiragez, a reas klemmou braz a-eneb ar Iuzevien o breudeur.

2. Ha lod anezo a lavare : Re a vibien hag a verhed on-eus ; kemerom evito evid ma hellim debri ha beva.

3. Lod all a lavare : Gouestlom or parkeier, or gwiniennou, hag on tiez, evid ma or-bezo ed e-pad an naonegez.

4. Ha lod all a lavare : Amprestom arhant evid paea tellou ar roue, ha room or parkeier hag or gwiniennou.

5. Ha bremañ or hig a zo evel kig or breudeur ; hag or mibien evel o mibien ; ha setu e lakaom e gwazoniez or mibien hag or merhed, ha lod euz or merhed a zo e sklaverez, ha n'on-eus ket peadra d'o dasprena ; rag or parkeier, hag or gwiniennou a zo e porz ar re all.

6. Droug braz a zavas ennon pa o hlevis o kroza en doare-ze.

7. Ober a ris va zoñj ganen, hag e teñsis ar re vraz hag ar renerien, hag e liviris dezo : Ha c'hwi a gemer kampi digand ho preudeur ? Ha me a zavas eur strollad braz en o eneb,

8. Hag e liviris dezo : Ni, evel ma ouzoh, on-eus dasprenet diouz or galloud or breudeur ar Iuzevien, pere a oa bet gwerzet d'ar broadou ; ha bremañ eta e werzot-hu ho preudeur, ha ni eo o daspreno ? Hag i a davas, ha ne gavjont ger ebed da lavaroud.

9. Ha me a lavaras dezo : N'eo ket mad ar pezh a rit : perag ne gerzit-hu ket e doujañs on Doue, gand aon na vem tamallet gand ar broadou a zo da enebourien deom ?

10. Me, ha va breudeur, ha va faotred, on-eus prestet da galz, arhant hag ed ; aotreit deom oll, na houlenim netra diganto, ha ma lezim ganto ar pezh a dleont deom.

11. Distaolit eta dezo hirio o farkeier, hag o gwiniennou, hag o gwez-olived, hag o ziez ; roit zoken evito ar hantved euz an arhant, euz an ed, euz ar gwin, hag euz an eoul oh boazet da gemeroud diganto.

12. Hag i a lavaras : Disteurel a raim dezo, ha ne houlenim netra diganto ; ober a raim evel ma levez. Neuze e halvis ar veleien, hag e likiis anezo da doui penaoz e rajent evel m'am-boa laavret.

13. Goude-ze eh hejis va askre, hag e liviris : Ra hejo Doue evel-se euz e di hag euz e labouriou, kement hini ha ne zeveno ket ar ger-ze ; ra vezo hejet evel-se, ha ra zeuy da veza gwan. Hag an oll bobl a lavaras : Amen. Hag i a veulas Doue. Ar bobl a reas eta evel ma oa bet lavaret.

14. Hogen adaleg an deiz e pehini e hourhemennas ar roue din ma vijen da rener e bro Juda, adaleg an unnegved bloaz beteg an eil ha tregont euz ar roue Artaksersez, e-pad daouzeg vloaz, me ha va breudeur n'on-eus jet debret ar bara a oa dleet d'ar renerien.

15. Hogen ar renerien genta a oa bet em raog, o-doa gwasket ar bobl, hag o-doa kemeret diganto daou-ugent sikl bemdez war ar bara, war ar gwin, ha war an

arhant ; hag o ministred o harge c'hoaz. Hogen me n'am-eus ket greet kement-se, o veza ma toujan Doue.

16. Hag ouspenn-ze e labouris evid aoza ar vur, ha ne brenis park ebed ; ha va oll baotred a zo en em strollet evid al labour.

17. Ar Iuzevien o-unan hag ar renerien, hag i kant den hag hanter-kant, hag ar re a oa deuet d'or havoud, euz ar poblou a oa war-dro deom, a zebre ouz va zaol.

18. Aozet e oa din bemdez eun ejenn, ha c'hweh dañvad euz ar re wella, heb niveri an evned ; hag euz a zeg devez da zeg devez, e roen kalz a win, hag a draou all, petra bennag na gemeren netra euz a gement a oa dleet d'am harg, rag gwall wasket e oa ar bobl.

19. Az-pezh koun ahanon, o ! va Doue, evid ober trugarez em heñver, hervez an oll vad em-eus greet d'ar bobl-mañ.

VI. Pennad.

Enebourien ar Iuzevien a glask o sponta. Kalon Nehemias.

1. Hogen pa glevas Sanaballat, ha Tobias, ha Gosem an Arabiad, hag an oll enebourien, penaoz em-boa azsavet ar vur, ha ne oa enni difreuz ebed (petra bennag n'em-oa ket gellet beteg eno lakad ar stalafiou ouz ar perzier) ;

2. Sanaballat ha Gosem a gasas etrezeg ennon, o lavaroud : Deus, ha greom kevredigez en eur vourh bennag euz a gompezenn Ono. Hogen i a venne ober droug din.

3. Ha me a gasas kannaded dezo, evid lavaroud : Eul labour braz a ran, ha ne hellan ket diskenni, gand aon na ve greet fall, en-dra ma'z ajen d'ho kavoud, ha ma tistrojen amañ.

4. Hogen kas a rejont etrezeg ennon evid lavaroud an heveleb tra a-benn peder gwech ; ha me a respontas bepred dezo evel ar wech kenta.

5. Neuze Sanaballat a gasas etrezeg ennon evid ar bempved gwech e baotr, gand eul lizer en e zorn, a oa skrivet evel-henn :

6. Klevet eo bet e-touez ar poblou, ha Gosem en-deus e lavaret, penaoz te hag ar Iuzevien a fell deoh en em zispaha, ha rag se eo e savez ar vur, hag e fell dit en em lakaad da roue warnezo ; ha dre ze,

7. Eh-eus lakaet profeded, pere a brezeg diwar da benn e Jeruzalem, o lavaroud : Roue eo e Judea. Ar roue a dle klevoud kement-se ; deus eta bremañ, evid ma en em guzulim kevred.

8. Ha me a gasas etrezeg enno, evid lavaroud : N'eo ket bet greet evel ma leverez : hogen euz da galon da-unan e lenne kement-se.

9. Hag ar re oll a sponte ahanom, o veza ma kredent penaoz e lezjem al labour, hag eh ehanjem. Hogen kreñvaad a ris va daouarn evid kement-se ;

10. Hag ez is e kuz e ti Semaias, mab Dalaias, mab Metabeel, pehini a lavaras din : Kuzuliom e ti Doue, e-kreiz an templ, ha serrom an noriou ; rag i a dle dond evid da laza, hag en noz-mañ e teuint evid da laza.

11. Ha me a lavaras : Ha den ebed heñvel ouzin a deh ? Ha piou evel dond a yelo en templ, hag a vevo ? N'ez in ket.

12. Hag eh anavezis penaoz n'en-deus ket Doue e gaset, hogen penaoz en-doa komzet ouzin e doare eur profed, hag e oa bet touellet gand Tobias ha Sanaballat :

13. Rag eñ en-doa bet arhant diganto evid va sponta, va lakaad da behi, ha kaoud droug da rebecha din.

14. Az-pezh koun ahanon, Aotrou, en abeg da oberiou Tobias ha Sanaballat, hag ivez ar profed Noadias, hag ar brofeded all, pere a felle dezo va sponta.

15. Ar vur a oe peurzavet er pempved deiz warn-ugent euz a viz Elul, a-benn daou zevez hag hanter-kant.

16. Pa glevas on oll enebourien kement-se, an oll boblou a oa war-dro deom a oe spontet, hag a vennas gand poell enno o-unan, hag a anavezaz penaoz al labourze a oa bet greet gand Doue.

17. Hogen en deziou-ze priñsed ar Iuzevien a gasas kalz a liziri da Dobias, ha Tobias a gasas euz e re dezo.

18. Rag kalz a dud a oa er Judea, pere o-doa greet le dezañ, o veza ma oa mab-kaer da Zec'henias, mab Area, ha m'en-doa Jonanan, e vab, kemeret da wreg merh Mosollam, mab Barac'hias :

19. Hag i a veule anezañ dirazon, hag a roe da anaoud dezañ ar pezh a lavaren ; ha Tobias a gase liziri evid sponta ahanon.

VII. Pennad.

Nivererez ar re a zeuas gand Zorobabel euz ar sklaverez.

1. Hogen goude ma oe peurzavet ar vur, hag em-boe lakaet an noriou, ha lehiet ar borzerien, hag ar ganerien, hag al Levited ;

2. E rois va gourhemennou da Hanani, va breur, ha da Hananias, priñs palez Jeruzalem (rag hemañ a oa evel eun den gwirion, hag a zouije Doue dreist ar re all).

3. Hag e liviris dezo : Na vezet ket digoret perzier Jeruzalem, ken na vezo tomm an heol. Ha pa oant c'hoaz eno, e oe serret ha prenet an noriou ; hag e likiis e gward tud Jeruzalem, pep hini d'e dro, ha pep hini dirag e di.

4. Hogen ar gêr a oa ehon ha braz, ha dibaot e oa ar bobl a oa enni, ha ne oa ket savet an tiez.

5. Hogen Doue a lakaas em halon strola ar re vraz hag ar renerien, hag ar bobl, evid ma niverjen anezo ; hag e kavis levr nivererez ar re a oa pignet da genta, war pehini e oa skrivet kement-mañ :

6. Ar re-mañ eo mibien ar broviñs, pere a zo distroet euz ar sklaverez, e pehini en-doa o haset Nabukodonozor, roue Babilon, hag a zo distroet da Jeruzalem, ha d'ar Judea, pep hini en e gêr.

7. Ar re a zeuas gand Zorobabel : Josue, Nehemias, Azraias, Raamias, Nahamani, Mardocheüs, Belsam, Mesfarat, Beguai, Nahum, Baana. Setu nivererez tud pobl Izrael.

8. Mibien Faros, daou vil daouzeg hag eiz-ugent.

9. Mibien Safalia, daouzeg ha tri-ugent.

10. Mibien Area, c'hweh-kant daou hag hanter-kant ;

11. Mibien Fahatmoab, euz a vibien Jozue ha Joab, daou vil eiz-kant ha triweh.

12. Mibien Elam, mil pevarzeg ha daouzeg-ugent.

13. Mibien Zetua, eiz-kant pemp ha daou-gent.

14. Mibien Zac'hai, seiz-kant ha tri-ugent.

15. Mibien Bannui, c'hweh-kant eiz ha daou-ugent.`

16. Mibien Bebai, c'hweh-kant eiz warn-ugent.
17. Mibien Azgad, daou vil daou ha c'hwezeg-ugent.
18. Mibien Adonikam, c'hweh-kant seiz ha tri-ugent.
19. Mibien Beguai, daou vil seiz ha tri-ugent.
20. Mibien Adin, c'hweh-kant pemp hag hanter-kant.
21. Mibien Ater, mab Hezekias, triweh ha pevar-ugent.
22. Mibien Hasem, eiz ha c'hwezeg-ugent.
23. Mibien Besai, pevar ha c'hwezeg-ugent.
24. Mibien Haref, daouzeg-kant daouzeg.
25. Mibien Gabaon, pemzeg ha pevar-ugent.
26. Mibien Betlehem ha Netufa, ezi ha nao ugent.
27. Tud Analot, eiz ha c'hweh-ugent.
28. Tud Betazmot, daou ha daou-ugent/
29. Tud Kariatirim, Kefrira, ha Bezot, seiz-kant tri ha daou-ugent.
30. Tud Rama, ha Gelia, c'hweh-kant unan warn-ugent.
31. Tud Machamas, daou ha c'hweh-ugent.
32. Tud Befel hag Hai, tri ha c'hweh-ugent.
33. Tud an Neho all, daou hag hanter-kant.
34. Tud an Elam all, mil pevar deg ha daouzeg-ugent.
35. Mibien Harem, c'hwzeg-ugent.
36. Mibien Jeriko, pemep ha seiteg-ugent.
37. Mibien Lod, Hadid, hag Ono, seiz-kant unan warn-ugent.
38. Mibien Senaa, tri mil nao hant ha tregont.
39. Ar veleien : Mibien Idaia e ti Josue, nao-hant trizeg ha tri-ugent.
40. Mibien Emmer, mil daou hag hanter-kant.
41. Mibien Fashur, mil seiz ha daouzeg-ugent.
42. Mibien Arem, mil seiteg.
43. Al Levited ; Mibien Josue ha Kedmihel.
44. Mibien Oduia, pevarzeg ha tri-ugent.
45. Ar ganerien : Mibien Asaf, eiz ha seiz-ugent.
46. Ar borzerien : Mibien Sillum, mibein Ater, mibien Trimon, mibien Akkub, mibien Halita, mibien Sobai, triweh ha c'hweh-ugent.
47. An Natineed : Mibien Sob, mibien Hasufa, mibien Tebbaot,
48. Mibien Keros, mibien Sisa, mibien Fadon, mibien Ledana, mibien Hagaba, mibien Selmai,
49. Mibien Hanan, mibien Geddel, mibien Gaher,
50. Mibien Raايا, mibien Rasin, mibien Nekota,
51. Mibien Gezem, mibien Aza, mibien Fases,
52. Mibien Beasi, mibien Munim, mibien Nefusim,
53. Mibien Bakbuk, mibien Hakufa, mibien Harhur,
54. Mibien Beslot, mibien Mahida, mibien Hrasa,
55. Mibien Berkos, mibien Sisara, mibien Tema,
56. Mibien Nasia, mibien Hatifa,
57. Mibien zervijerien Salomon, mibien Sotai, mibien Soferet, mibien Farida,
58. Mibien Jahal, mibien Darkan, mibien Jeddell,
59. Mibien Safatia, mibien Hatil, mibien Foc'heret, pehini a oa savet euz a Zabaim, mab Amon.
60. An Natineed oll, ha mibien zervijerien Salomon, daouzeg ha naonteg-ugent.

61. Hogen setu amañ ar re a zeuas euz a Delmela, euz a Delharsa, euz a Gerub, euz a Addon, hag euz a Emmer, ha ne helljont ket rei da anaoud ti o zadou, hag o gouenn, na ma oant euz a Izrael.

62. Mibien Dalaia, mibien Tobias, mibien Nekoda, c’hweh-kant daou ha daou-ugent.

63. Hag euz ar veleien : Mibien Habia, mibien Akkos, mibien Berzellai, pehini a gemeras da wreg unan euz a verhed Berzellai euz a Halaad, hag a oe galvet dre o ano.

64. Ar re-mañ a glaskas o skrid en nivererez, ha n’her havjont ket ; hag i a oe distaolet euz ar velegiez.

65. Hag Atersala a lavaras dezo na zebrjent ket euz a Zant ar Zent¹⁸⁹, ken na zavje eur beleg gouizieg ha lenneg.

66. An oll dud-se evel eun den hepken, daou vil den ha daou-ugent, ha triweh-ugent ;

67. Heb niveri o zervijerien hag o mitizien, a bere e ao seiz mil seiteg ha c’hwezeg-ugent : hag en o zouez, kanerien ha kanerezed, pemp ha daouzeg-ugent.

68. O hezeg a oa seiz-kant c’hweh ha tregont : hag o muled, pemp ha daouzeg-ugent.

69. O hañvaled, pevar-hant pemp ha tregont ; hag o azened, c’hweh mil seiz-kant ugent.

Beteg amañ e lenner ar pezh a zo skrivet en nivererez : ar pezh a zo war-lerh eo danevell Nehemias.

70. Lod euz a bennou an tiadou a roas eun dra bennag evid al labour. Atersata a roas evid an teñzor mil dram aour, hanter-kant fioleñn, ha pemp-kant sae ha tregont evid ar veleien.

71. Ha lod euz a bennou an tiadou a roas da deñzor al labour, ugent mil dram aour, ha daou vil daou-hant min arhant,

72. Hag ar re all euz ar bobl a roas ugent mil dram aour, daou vil min arhant, ha seiz sae ha tri-ugent evid ar veleien.

73. Ar veleien hag al Levited, hag ar borzerien, hag ar ganerien, hag ar bobl, hag an Natineed, hag Izrael oll a chomas en o hêriou.

VIII. Pennad.

Esdras a lenn al lezenn dirag ar bobl.

1. Hag ar seizved miz a oa deuet ; ha bugale Izrael a oa en o hêriou. Hogen an oll bobl en em stollas evel eun den hepken, war al leur-gêr a zo dirag porz an doureier ; hag e leverjont da Esdras ar skrivagner ma tegasje levr lezenn Moizez, en-doa gourhemennet an Aotrou da Izrael.

2. Esdra, ar beleg, a zegasas eta al lezenn dirag ar strollad euz ar wazed hag euz ar merhed, hag euz ar re oll a helle he foella, en deiz kenta euz ar seizved miz.

3. Hag eñ a lennas ennañ frêz el leur-gêr a oa dirag porz an doureier, adaleg ar mintin beteg kreisteiz, dirag ar wazed hag ar merhed hag ar re boelleg ; ha diskouarn an oll bobl a oa savet da zelaoui al levr.

¹⁸⁹ euz a Zant ar Zent : traou santel-braz.

4. Hogen Esdras, ar skrivagner, en em lakaas en e zav war eun derez koad en-doa greet evid komza ; Ha Matatias, ha Semeia, hag Ania, hag Uria, hag Helsia, ha Maasia, en em lakaas a-zehou dezañ ; ha Fadaia, ha Misael, ha Melc'hia, hag Hasum, hag Hasbadana, ha Zac'harias, ha Mosollam, a-gleiz.

5. Hag Esdras a zigoras al levr dirag an oll bobl ; ha p'en-doe e zigoret, an oll bobl a zavas en he sav.

6. Hag Esdras a veulas an Aotrou, an Doue braz ; hag an oll bobl a respontas : Amen, amen, o sevel o daouarn. Hag i o stoui, en em strinkas d'an douar, hag azeulas Doue.

7. Koulskoude Josue, ha Bani, ha Serebia, Jamin, Akkub, Septai, Odia, Maasia, Selita, Azarias, Jozabed, Hannan, Falaia Levited, a lakaas ar bobl da devel evid am selaouje al lezenn ; hogen ar bobl a oa en he sav, pep hini en e reiz.

8. Hag i a lennas e levr lezenn Doue, frêz hag en eun doare sklêr : hag ar bobl a glevas ar pezh a lennent.

9. Hogen Nehemias (pehini eo Atersata), hag Esdras, beleg ha skrivagner, hag al Levited, pere a zisklêrie al lezenn d'an oll bobl, a lavaras : An deiz-mañ a zo gouestlet d'an Aotrou, on Doue. Na leñvit ket, ha na ouelit ket. Rag an oll bobl a ouele, o klevoud geriou al lezenn.

10. Hag eñ a lavaras dezo : It, ha debrit kig lard, hag evit gwin c'hwek, ha roit lod d'ar re pere n'o-deus aozet netra evito : rag an deiz-mañ a zo eun deiz santel d'an Aotrou ; ha n'en em dristait ket, rag levenez an Aotrou eo on nerz.

11. Hogen al Levited a lakae an oll bobl da devel, o lavaroud : Tavit, ha n'en em hlaharit ket ; rag eun deiz santel eo hemañ.

12. An oll bobl eta a yeas kuit, evid debri, hag eva, ha rei lod d'ar re all, hag ober eul levenez vraz ; rag i o-doa poellet ar geriou en-doa Esdras desket dezo.

13. Hag antronoz pennou tiadou an oll bobl, ar veleien hag al Levited, en em strollas etrezeg Esdras ar skrivagner, evid ma teuje da zisklêria dezo geriou al lezenn.

14. Hag i a gavas skrivet el lezenn, penaoz en-doa an Aotrou gourhemennet, dre henou Moizez, ma chomje bugale Izrael dindan teltou en deiz gouel, er seizved miz ;

15. Ha ma vrudjent ha ma embannjent en o oll gêriou, hag e Jeruzalem, o lavaroud : It war ar menez, ha degasit skourrou gwez-olived, ha skourrou gwez ar re gaerra, skourrou mirt, ha skourrou palmez, ha skourrou gwez bodeg, evid ober teltou ganto, evel ma eo skrivet.

16. Hag ar bobl a yeas kuit, hag a zegasas an dra-mañ. Ha pep hini a reas evitañ e doare teltou war lein e di, hag e leurenn e di, hag e leurenn ti Doue, ha war gwiler porz an doureier, ha war gwiler porz Efraim.

17. An oll strollad eta euz ar re a oa deuet euz ar sklaverez a reas teltou, hag a chomas dindan an teltou ; hogen abaoe deziou Josue, mab Nun, bugale Izrael n'o-doa ket greet evel-henn. Hag al levenez a oe braz-meurbed.

18. Hogen Esdras a lennas bemdez e levr lezenn Doue, adaleg an deiz kenta beteg an diweza ; hag i a reas ar gouel e-pad seiz devez, hag ar strollad en eizved devez, hervez ar hiz.

IX. Pennad.

Pinijenn ar bobl. Pedenn al Levited.

1. Hogen er pevare deiz warn-ugent euz ar miz-se bugale Izrael en em zastumas e yun hag e seier ; hag i goloet a zouar.

2. Ha gouenn bugale Izrael en em rannas euz a beb den a-ziavêz ; hag i a zavas, hag a anzavas o fehejou, ha fallagriezou o zadou.

3. Hag o sevel en o zav, e oe lennet dezo lezenn an Aotrou, o Doue, peder gwech en deiz : ha peder gwech eh anavezent, hag eh azeulent an Aotrou, o Doue.

4. Hogen war derez al Levited e savas Josue, ha Bani, Sarebias, ha Kedmihel, Sabania, Bonni, Sarebias, Bani, ha C'hanani ; hag i a harmas gand eur vouez kreñv etrezeg an Aotrou, o Doue.

5. Hag al Levited Josue, ha Kedmihel, Bonni, Harebnia, Serebia, Odaia, Sebnia, Fatahia, a lavaras : Savit, meulit an Aotrou, ho Toue, a viken da viken : ra vezo benniget ano braz da hloar gand peb bennoz ha meuleudi.

6. Rag n'eus Aotrou ebed nemedout ; te eo eh-eus greet an neñv, ha neñv an neñvou, hag e oll arme ; an douar ha kement a zo ennañ ; ar mor ha kement a zo ennañ ; ha te eo a ro ar vuhez ad gement-se ; hag arme an neñv a azeul ahanout.

7. Te eo, Aotrou Doue, eh-eus dilennet Abram, hag eh-eus e zegaset euz a dan ar Galdeed, hag eh-eus roet dezañ an ano a Abraham.

8. Kavet eh-eus e galon feal dirazout, hag eh-eus greet kevredigez gantañ, evid rei dezañ ha d'e ouenn, bro ar Hananeed, an Heteed, hag an Amoreed, hag ar Ferezed, hag ar Jebuseed, hag ar Hergeseed : hag eh-eus sevenet da heriou, o veza ma out gwiruon.

9. Gwelet eh-eus ivez glahar on tadou en Ejipt, ha klevet eh-eus o garm war aod ar mor Ruz.

10. Ha greet eh-eus aroueziou ha burzudou war Faraon ha war e oll zervijerien, ha war an oll bobl euz e vro ; rag gouezet eh-eus penaoz o-doa aozet pobl Izrael gand rogentez ; hag eh-eus greet eun ano dit, evel ma ema c'hoaz hirio.

11. Hag ar mor eh-eus rannet en o raog ; hag i o-deus treuzet ar mor war ar seh. Hogen o heskinerien eh-eus stlapet d'ar goueled, vel eur mên en doureier ar re greñva.

12. Rener out bet dezo en eur peul koabr a-hed an deiz, hag en eur peul tan a-hed an noz, evid ma hellje beza gwelet ganto an hent dre behini e tleent kerzoud.

13. Diskennet out war menez Sanai, hag eh-eus komzet outo euz an neñv, roet eh-eus dezo barnedigezou reiz, hag eul lezenn a wirionez, ha lidou, ha kemennou mad.

14. Roet eh-eus da anaoud dezo da zabbat santel, hag eh-eus gourhemennet dezo, dre henou Moizez da zervijer, da gelennoù, ha da lidou, ha da lezenn.

15. Bara euz an neñv eh-eus roet ivez dezo, en o naon, hag eh-eus tennet dour dezo euz ar mên, en o zehed ; hag eh-eus lavaret dezo ma'z ajent en douar az-poa touet da rei dezo, ha ma perhennent anezañ.

16. Hogen ar re-mañ, hag on tadou a zo en em renet gand balhder : kaledet o-deus o fenn, ha n'o-deus ket selaouet da hourhemennou.

17. Ha n'eo ket fellet dezo klevoud, ha n'eo ket deuet da goun dezo ar burzudou az-poa greet evito. Kaledet o-deus o fennou, ha dre enebiez int distroet a-nevez ouz ar sklaverez. Hogen te, Doue talvouduz, hegarad ha trugarezuz, habask ha leun a drugarez, n'eh-eus ket o dilezet :

18. Ha p'o-doe zoken greet evito eul leue teuzet¹⁹⁰, ha lavaret : Hennez eo da Zoue pehini en-deus da dennet euz an Ejitp, hag o-deus greet touadellou braz.

19. Hogen te, en da drugarezou braz, n'eh-eus ket o dilezet en distro ; ar peul koabr n'eo ket tehet diouto, evid o rena a-hed an deiz, hag ar peul tan a-hed an noz, evid diskoueza dezo an hent dre behini e tleent kerzoud.

20. Da spered mad eh-eus roet dezo evid o deski, ha n'eh-eus ket tennet da vann¹⁹¹ euz o genou ; ha dour eh-eus roet dezo en o zehed.

21. Hga eh-eus kresket niver o mibien evel stered an neñv, hag eh-eus o haset en douar e pehini az-poa lavaret d'o zadou ez ajent da vistri.

22. Ha roet eh-eus dezo ar rouanteleziou, hag ar poblou ; hag eh-eus o rannet ganto dre ar sort ; hag i o-deus bet en o herz bro Sehon, ha bro ar roue Hesebon, ha bro Og, roue Basan.

23. Hag eh-eus kresket niver o mibien evel stered an neñv, hag eh-eus o haset en douar e pehini ez-poa lavaret d'o zadou ez ajent da vistri.

24. Hag o mibien a zeuas hag a biaouas an douar, ha te eh-eus izellaet dirazo ar Hananeed, tud ar vro ; hag eh-eus o lakaet etre o daouarn, hag ivez o roueed, ha poblou ar vro, evid ma rajent dezo evel ma karjent.

25. Kemeroud a rejont eta kêriou kreñv, hag eun douar strujuz ; hag i o-devoe en o herz tiez leun a beb mad ; ha puñsou greet gand re all, gwini, ha gwez-olived, ha kalz a wez-frouez ; hag i o-deus debret, hag o-deus bet o gwalh, hag a zo deuet da veza lard, hag o-deus bet kalz a draou c'hwek gand da vadelez vraz.

26. Hogen i o-deus da lakaet da vond droug ennout : pellaet int diouzit ; ha taolet eo ganto da lezenn a-dreñv o hein ; lazet o-deus da brofeded, pere o fede stard da zistrei ouzout ; hag o-deus greet touadellou braz.

27. Rag se eh-eus o lakaet etre daouarn o enebourien, pere o-deus o glaharet. Hag e amzer o gloaz o-deus garmet etrezeg ennout ; ha te eh-eus o zelaouet euz an neñv, hag hervez da drugarezou braz, eh-eus roet dezo dieuberien, evid o zenna euz a zorn o enebourien.

28. Ha pa int bet en ehan, int distroet a-nevez da ober an droug dirazout ; ha te eh-eus o lezet etre daouarn o enebourien, pere o-deus o aotrouniet. Hag i a zo distroet, hag o-deus garmet ouzit ; ha te eh-eus selaouet outo euz an neñv, hag eh-eus o diboaniet aliez hervez da drugarezou.

29. Hag eh-eus o fedet stard da zistrei d'az lezenn. Hogen i a zo embreget gand rogoni, ha n'o-deus ket selaouet da hourhemennou ; pehet o-deus a-eneb da varnedigezou, e pere e vevo an den, pa o zeveno ; ha troet o-deus o hein dit, hag o-deus kaledet o fenn, ha n'o-deus ket selaouet.

30. Gourzet eh-eus warnezo e-pad meur a vloaz, hag eh-eus o erbedet en da spered dre henou da brofeded ; ha n'o-deus ket selaouet ; hag eh-eus o lakaet etre daouarn poblou an douar.

31. Koulskoude en da drugarezou braz n'eh-eus ket o haset da get, ha n'eh-eus ket o dilezet, o veza ma out eun Doue trugarezuz hag habask.

32. Bremañ eta, on Doue braz, kreñv ha gallouduz, pehini a vir da gevredigez ha da drugarez, na zistro ket da lagad diouz ar hlahar a zo kouezet warnom, ha war or roueed, ha war or priñsed, ha war or beleien, ha war or profeded, ha war on tadou, ha war da oll bobl, abaoe deziou roue an Asiria beteg-henn.

33. Ha te a zo gwirion e kement a zo c'hoarvezet ganeom ; rag ar wirionez eh-eus greet ; hogen ni n'on-eus greet nemed fallagriez.

¹⁹⁰ eul leue teuzet : eul leue teuz, arem.

¹⁹¹ da vann : mann (paner).

34. Or roueed, or priñsed, or beleien, hag on tadou n'o-deus ket miret da lezenn : n'o-deus ket selaouet da hourhemennou, nag an testeniou a desteniez enno.

35. Hag i en o rouanteleziou, hag er madou braz ez-poa roet dezo, hag en douar ehon ha strujuz ez-poa lakaet dirazo, n'o-deus ket da zervijet, ha n'int ket distroet euz o gwall dechou.

36. Setu ni a zo sklaved hirio ; hag en douar ez-poa roet d'on tadou, evid ma tebrjent ar bara hag ar frouez a zeuje ennañ, setu ni a zo sklaved.

37. Hag e frouez a gresk evid ar roueed eh-eus lakaet warnom en abeg d'or pehejou ; aotrounia a reont war or horvou, ha war ol loened, evel ma karont ; ha ni a zo en eur hlahar vraz.

38. War kement-se eta e reom kevredigez ganez, hag e skrivom anezi ; hag or priñsed, ol Levited, hag or beleien o-deus he siellet.

X. Pennad.

Anoïou ar re a ziellas ar gevredigez.

1 da 27 : n'eus nemed anoïou tud.

28. Hag ar re all euz ar bobl, ar veleien, al Levited, ar borzerien, ar ganerien, an Natineed, hag ar re a oa en em rannet euz a boblou ar broadou evid lezenn Doue, o gwraze, o mibien, hag o merhed.

29. Ar re oll o-doa o skiant-vad a gretee evid o breudeur, hag ar re genta anezo a zeuas da rei o ger, ha da doui penaoz e kerzjent e lezenn Doue, en-doa roet dre zorn Moizez, servijer Doue, evid seveni ha miroud oll hourhmennoù an Aotrou, on Doue, hag e varnedigezou, hag e lidou ;

30. Hag evid na roijem ket or merhed da boblou ar broadou, ha na gemerjem ket o merhed evid or mibien

31. Mar deu poblou ar broadou da zegas marhadourez, pe eun dra bennag evid ar vevidigez, evid gwerza e deiz ar sabbat, ne brenim netra diganto e deiz ar sabbat, nag en eun deiz santelet. Ar seizved bloaz a virim, hag e lezim peb dle.

32. Lakaad a raim warnom al lezenn da rei beb bloaz an drederenn euz a eur sikl evid labour ti on Doue.

33. Evid ar baraou kinnig, hag ar sakrifis peurbaduz, hag ar sakrifis-losk peurbaduz e deziou ar sabbat, e deizou kenta ar miz, er goueliou-lid, er sakrifisou a beoh, hag er re evid ar pehed : ma vezo pedet evid Izrael, ha na vezo dioueret netra a gement a zo red evid ti on Doue.

34. Teurel a rejom ivez d'ar sort diwar-benn kinnig ar heuneud, etre ar veleien, hag al Levited hag ar bobl, evid ma vije douget e ti on Doue, gand tiadou on tadou, en amzer merket, a vloaz e bloaz, evid e lakaad da zevi war aoter an Aotrou on Doue, evel ma eo skrivet e lezenn Moizez,

35. Ha ma tougjem beb bloaz da di an Aotrou, ar re genta-ganet euz on douar, hag ar henta frouez euz a beb gwezenn :

36. Hag ar re genta-ganet euz or mibien, hag euz ol loened, evel ma eo skrivet el lezenn ; hag ar re genta-ganet euz on ejenned, hag euz on deñved, evid ma vijent kinniget e ti on Doue, d'ar veleien pere a zervij e ti on Doue :

37. Ha da zegas d'ar veleien, e teñzor on Doue, ar henta frouez euz or boued, hag euz or braoued, ha frouez on oll wez, hag ar rezin, hag an olived, ha da baea

an deog euz on douar d'al Levited. Al Levited a zavo ivez an deog war ol labour en oll gêriou.

38. Ar beleg, mab Aaron, en-devezo e lod euz an deogou gand al Levited ; hag al Levited a ginnigo an degved lodenn euz o deog e ti on Doue evid beza miret e ti an teñzor.

39. Rag bugale Izrael ha mibien Levi a gaso da di an teñzor kenta frouez an ed, ar gwin, hag an eoul ; hag eno e vezo listri sakr, ha beleien, ha kenerien, ha porzerien, ha servijerien ; ha ne zilezim ket ti on Doue.

XI. Pennad.

Euz ar re a chom e Jeruzalem hag e kêriou Juda.

1. Hogen priñsed ar bobl a chomas e Jeruzalem ; hogen ar re all euz ar bobl a daolas d'ar sort evid ma chomje an degved lodenn anezo e Jeruzalem, ar gêr zantel, hag an nao lodenn all er hêriou all.

2. Hogen ar bobl a veulas ar re oll a oa en em ginniget evid chom e Jeruzalem.

3. Setu amañ eta priñsed ar broviñs, pere a chomas e Jeruzalem, hag e kêriou Juda. Hogen pep hini a chomas en e dra, hag en e gêriou ; Izrael, ar velein, al Levited, an Natineed, ha mibien servijerien Salomon.

4. Ha lod euz a vibien Juda, hag euz a vibien Benjamin a chomas e Jeruzalem. Euz a vibien Juda : Ataias, mab Aziam, mab Zac'haarias, mab Amarias, mab Zafatias, mab Malateel. Euz a vibien Farez :

5. Maasia, mab Baruc'h, mab Kolhoza, mab Hazia, mab Adaia, mab Joiarib, mab zac'harias, mab Siloni,

6. An oll vibien-ze da Farez, pere a chomas e Jeruzalem, a oe pevar-hant eiz ha tri-ugent, hag i tud kreñv.

7. Setu amañ mibien Benjamin : Sellum, mab Mosollam, mab Joed, mab Fadaia, mab Kolaia, mab Masia, mab Eteel, mab Isaia ;

8. Ha goude hemañ Gebbai, Sellai ; nao-hant eiz warn-ugent ;

9. Ha Joel, mab Zec'hri, a oa da benn warnezo, ha Judas, mab Senua, an eil war gêr.

10. Hag euz ar veleien : Idaia, mab Joarib, ha Jac'hin ;

11. Saraia, mab Helsias, mab Mosollam, mab Sadok, mab Meraiot, mab Ac'hitob, rener ti Doue ;

12. Hag o breudeur pere a ree labour an templ ; eiz-kant daou warn-ugent. Hag Adaia, mab Jeroham, mab Feselia, mab Amsi, mab Zac'harias, mab Fesur, mab Melc'hias ;

13. Hag e vreudeur priñsed an tiadou ; daou ha daouzeg-ugent ; hag Amasai, mab Azreel, mab Ahazi, mab Mosollamot, mab Emmer ;

14. Hag o breudeur galloudeg-braz : eiz ha c'hweh-ugent ; ha Zabdiel a oa da benn warnezo, hag eñ mab d'ar re halloudeg.

15. Hag euz al Levited : Semeia, mab Hasub, mab Azarikam, mab Hasahia, mab Boni,

16. Ha Sabatai, ha Jozabed, euz a briñsed al Levited, war an oll labouriou a reed en diavêz euz a di Doue.

17. Ha Matania, mab Mic'ha, mab Zebedei, mab Asaf, a oa da benn war ar re a veule hag a anzave gloar an Aotrou er bedenn, ha Bekbesia, an eil euz e vreudeur, hag Abda, mab Samua, mab Galal, mab Iditum :

18. An oll Levited er gêr zantel ; pevar ha pevarzeg-ugent.

19. Hag ar borzerien : Akkub, Telmou, hag o breudeur, pere a ziwalle an noriou ; daouzeg hag eiz-ugent.

20. Hag ar re all euz a Izrael, beleien ha Levited, a chomas e oll gêriou Juda, pep hini en e dra.

21. Hag an Natineed, pere a chomas e Ofel ; ha Siaha, ha Gasfa, a oa da benn war an Natineed.

22. Ha priñs al Levited e Jeruzalem, Azzi, mab Bani, mab Hasabia, mab Matanias, mab Mic'ha. Euz a vibien Asaf e oe kanerien e servij ti Doue.

23. Rag ar roue en-doa roet e hourhemenn diwar o fenn, hag ar reiz e peb devez e-touez ar ganerien.

24. Ha Falahia, mab Mesezebel, euz a vibien Zara, mab Juda, a oa dindan dorn ar roue, e kement a zelle ouz ar bobl.

25. Hag e-keñver al lehiou all e pere e chomjont ; lod euz a vibien Juda a chomas e Kariatarbe, hag en he fabourziou ; hag e Dibon, hag en he fabourziou ; hag e Kabeseel, hag en he fabourziou.

26. Hag e Jesue, hag e Molada, hag e Betfalet,

27. (*da 36, anoïou lehiou*).

XII. Pennad.

Gouestlerez muriou Jeruzalem.

1. Setu amañ ar veleien hag al Levited a bignas gand Zorobabel, mab Salatiel, ha gand Josue : Saraia, Jeremias, Esdras,

2. da 6 : (*anoïou tud*).

7. Idaia. Ar re-ze eo priñsed ar veleien, hag o breudeur e deziou Josue.

8. Hag al Levited : (*anoïou tud*), pere a oa da benn, gand o breudeur, war ar hanaouennou santel.

9. (*anoïou tud*), pep hini en e garg.

10. Hogen Josue a oa tad Joasim, ha Joasim a oe tad Eliasib, hag Eliasib a oe tad Joiada ;

11. Ha Joiada a oe tad Jonatan, ha Jonatan a oe tad Jeddaea.

12. Hogen e deziou Joasim, setu amañ ar veleien ha pennou o ziadou : euz a Zarai... (*anoïou tud*)

13. (*da 27*). Hogen evid sakrerez mur Jeruzalem, e eo klasket al Levited euz o oll lehiou, hag e oent degaset da Jeruzalem, evid ma rajent ar sakrerez-se gand levezeg hag anaoudegez-vad, gand kanaouennou, ha simbalou, ha lirennou, ha telennou.

28. Hogen mibien ar ganerien en em strollas euz ar hompezennou war-dro da Jeruzalem, hag euz a vourhiou Netufati.

29. Hag euz a di Galgal, hag euz a vroïou Geba hag Azmavel ; rag ar ganerien o-doa savet bourhiou evito war-dro da Jeruzalem.

30. Ar veleien hag al Levited en em hlannaas, hag a hlanas ar bobl, hag ar perzier, hag ar vur.

31. Ha me a lakaas priñsed Juda da bigna war ar vur ; hag e ris diou vandenn vraz evid kana meuleudiou. Hag i a yeas a-zehou war ar vur, etrezeg porz an teil.

32. Hag Osaias a yeas war o lerh, hag an hanter euz a briñsed Juda,

33. Hag Azarias, Esdras, ha Benjamin, ha Semeia, ha Jeremias.

34. Hag euz a vibien ar veleien gand o herniel-boud, Zac'harias, mab Jonatan, mab Semeia, mab Matanias, mab Mic'hala, mab Zac'hur, mab Asaf ;

35. Hag e vreudeur, Semeis, hag Azareel, Malalai, Galalai, Natanael, ha Judas, hag Hanani, gand binviou David an den Doue ; hag Esdras ar skrivagner en o raog ouz porz ar feunteun.

36. Hag i a bignas war an tu eneb, e dereziou kêr David, el leh ma sav ar vur dreist ti David, ha beteg porz an doureier war-zu ar sav-heol.

37. Hag an eil bandenn euz ar re a gane meuleudiou, a yee etrezeg an tu eneb ; ha me war he lerh, hag an hanter euz ar bobl war ar vur, ha war an tour euz ar forniou, ha beteg al lod ledanna euz ar vur,

38. Ha war porz Efraim, ha war ar porz koz, ha war porz ar pesked, ha war tour Hananeel, ha war tour Emai, ha beteg porz an tropell ; hag i a chomas ouz porz an diwall.

39. Hag an diou vandenn euz ar re a gane meuleudiou e ti an Aotrou, a chomas en o zav, ha me ivez, hag an hanter euz ar pennou-bro a oa ganen :

40. Hag ar veleien ivez : Eliakim, Masia, Miamin, Mic'hea, Elioenai, Zac'harias, Hanania, gand kerniel-boud.

41. Ha Masia, ah Semeia, hag Eleazar, hag Azri, ha Johanan, ha Melc'hia, hag Elam, hag Ezer ; hag ar ganerien a ganas skiltr, ha Jezraia o rener.

42. Hag i a lazas kalz a viktimou en deiz-se, hag en em laouennaas : rag Doue en-doa o harget euz a eul levez vraz ; o gwraez ivez, hag o bugale, en em laouennaas, ha levez Jeruzalem a oe klevet a-bell.

43. Dilennet e oe ivez en deiz-se, e-touez ar veleien hag al Levited, tud evid o lakaad da benn war kambrou an teñzor, war ar braoued, war ar henta frouez, ha war an deogou, evid ma hellje ar re genta euz a gêr o degemeroud diganto gand trugarezou braz : rag Juda en em laouennaes kaer, o veza ma oa eno ar veleien hag al Levited.

44. Hag i a viras gand gourhemennou o Doue, ha gourhemenn an dihaoudigez ; hag ivez ar ganerien hag ar borzerien, hervez kemenn David, ha Salomon e vab :

45. Rag e deiziou David hag Asaf, abaoe ar penn kenta, e oe lakaet priñsed war ar ganerien, evid meuli hag anzavoud Doue en o han.

46. Hag Izrael oll, e deiziou Zorobabel, hag e deiziou Nehemias, a roas bemdez o lod d'ar ganerien ha d'ar borzerien : rei a reent ivez euz an traou santel d'al Levited , hag al Levited a roe euz an traou santel da vibien Aaron.

XIII. Pennad.

Al lezenn a zo lennet. Nehemias a gastiz kalz direziou.

1. Hogen en deiz-se e oe lennet en eul levr euz a Voizez dirag ar bobl, hag e oe kavet skrivet ennañ penaoz ne dle biken an Ammonited hag ar Voabited mond e iliz Doue :

2. O veza n'o-deus ket diambrouget bugale Izrael gand bara ha dour : ha ma o-deus degaset Balaam en o eneb, evid o milisien ; hag on Doue a droas ar valloz e bennoz.

3. Hogen p'o-doe klevet al lezenn, e rannjont euz a Izrael an oll zivêzidi.

4. Ha war gement-se edo Eilasib ar beleg, pehini a oa bet da benn war teñzor ti on Doue, hag a oa kar-nez da Dobias,

5. Hogen lakaad a reas ober evitañ eun teñzor braz ; hag eno e oe kaset dirazañ evel roou, ezañs, ha listri, ha deog an ed, hag ar gwin hag an eoul ; lod al Levited, hag ar ganerien, hag ar borzerien, ha preveudiou ar veleien.

6. Hogen en oll zeziou-ze ne oan ket e Jruzalem ; rag en eil bloaz ha tregont euz a Artaksersez, roue Babilon, ez is d'e gavoud, hag e penn va buhez, e oen kaset kuit gand ar roue ;

7. Hag o veza deuet da Jeruzalem, eh anavezis an droug en-doa greet Eliasib e-keñver Tobias, oh ober dezañ eun teñzor e porched ti Doue.

8. Hag an droug a gavis braz-meurbed ; hag e taolis arrebeuri ti Tobias er-mêz euz an teñzor.

9. Hag e kemenennis glannaad an teñzor ; hag e likiis kas ennañ listri ti Doue, ar sakrifis hag an ezañs.

10. Anaoud a ris ivez penaoz lodou al Levited ne oant ket bet roet dezo ; ha penaoz al Levited, hag ar ganerien, hag ar zervijerien, a oa tehet pep hini d'e vro.

11. Neuze e komzis stard ouz ar renerien, hag e liviris dezo : Perag on-eus-ni dilezet ti Doue ? Ha me o strollas, hag o lakaas da chom en o hargou.

12. Ha Juda oll a zegase er solierou an deog euz an ed, euz ar gwin, hag euz an eoul.

13. Ha ni a lakaas da renerien war ar solierou, Selemias ar beleg, ha Sadok ar skrivagner, ha Fadaias euz al Levited ; hag en o heñver, Hanan, mab Zac'hur, mab Matanias, o veza ma oant bet anavezet evel tud feal : ha lodou o breudeur a oe fiziet enno.

14. Az-pezh koun ahanon, va Doue, en abeg da gement-se, ha na gas ket da get ar pezh em-eus greet a vad e ti va Doue, hag en e lidou.

15. En deziou-ze e welis tud e Juda, pere a waskelle e deiz ar sabbat, pere a zouge malanou, hag a vehie war azened gwin, ha rezin, ha fiez, ha behiou a beb doare, evid degas da Jeruzalem e deiz ar sabbat. Ha me a hourhennas dezo na werjent mui nemed en deziou e pere e oa aotreet gwerza.

16. An D/Tiried ivez a chomas er gêr, hag a zegase enni pesked, ha kement a oa mad da werza : hag i o gwerze da vibien Juda, e deziou ar sabbat, e Jeruzalem.

17. Rag se e tamallis ar re genta euz a Juda, hag e liviris dezo : Perag eo an droug-se a rit ? Ha perag e saotrit-hu deiz ar sabbat ?

18. Ha n'eo ket evel-henn o-deus greet on tadou ? Ha n'eo ket evel-se en-deus on Doue degaset warnom, ha war ar gêr-mañ, an oll zroug-se ? Ha c'hwi a denn c'hoaz buanegez an Aotrou war Izrael, o terri ar sabbat.

19. Pa oe eta perzier Jeruzalem en ehan e deiz ar sabbat, e liviris serra an noriou, hag e hourhemennis e vijent digoret nemed goude ar sabbat ; hag e likiis paotred din e-tal ar perzier, evid na zegasje den beh ebed e-barz, e dezi ar sabbat.

20. Hag ar varhadourien, hag ar re o-doa eun dra bennag da werza, a chomas er-mêz euz a Jeruzalem eur wech pe ziou.

21. Ha me grozas anezo, hag a lavaras dezo : Perag e chomit-hu e-tal ar vur ? Ma her grit eun eil gwech, e likiin va dorn warnoh. Abaoe neuze eta en zeujont mui e deziou ar sabbat.

22. Lavaroud a ris ivez d'al Levited en em hlana, ha dond da ziwalloud ar perzier, ha santela deiz ar sabbat. Rag se eta, va Doue, az-pezh koun ahanon hag az-pezh truez ouzin, hervez al lod braz euz da drugarezou.

23. En deiziou-ze e welis ivez Iuzevien pere a gemere gwrazez e-touez an Azotided, an Ammonited, hag ar Voabited.

24. Hag o mibien a gomze a-veh e yez an Azotided, ha ne hellent ket komza e yez ar Iuzevien ; hag i a gomze hervez an eil pobl hag eben.

25. Ha me o hrozas, hag a villigas anezo, hag e ris o zouga¹⁹² ; hag e likiis anezo da doui dirag Doue, penaoz ne rojent ket o merhed d'o mibien, ha ne gemerjent ket euz o merhed evid o mibien, hag evito o-unan, o lavaroud :

26. Ha n'eo ket evel-se e pehas Salomon, roue Izrael ? Ha koulskoude ne oe roue ebed heñvel outañ e-touez an oll boblou ; hag eñ a oe karet braz gand e Zoue, ha Doue en-doa e lakaet da roue war Izrael oll ; ha merhed a-ziavêz hel lakaas ad behi.

27. Ha ni a vezo ivez dizent, hag a ray an oll zroug-se ; ha terri a raim lezenn on Doue, o kemeroud gwrazez a-ziavêz ?

28. Hogen unan euz a vibien Joiada, mab Eliasib, ar beleg-braz, a oa da vab-kaer da Zanaballat an Horonitad ; ha me her hasas kuit diouzin.

29. Az-pezh koun, Aotrou va Doue, euz ar re a zaotr ar velegiez, ha beteg lezenn ar veleien hag al Levited.

30. O glana ris eta euz an oll ziavêzidi, hjag e likiis ar veleien hag al Levited, pep hini en e reiz hag en e labour,

31. Hag evid kinnig ar heuneud en deiziou merket, hag evid ar preveudiou. Az-pezh koun ahanon, o ! va Doue, en da drugarez. Amen.

LEVR TOBIAS

I. Pennad

Tobias a vir al lezenn. Sevel a ra e vab e doujañs Doue

¹⁹² o zouga : ?

1. Tobias euz a vreuriez hag euz a gêr Neftali, pehini a zo e Galilea uhella, a-zioh Naason , a-dreñv an hent a gas d'ar huz-heol, gand kêr Setet a-gleiz.
2. A oe kaset da sklav e deziou Salmanasar, roue an Asiried ; ha petra bennag ma oa e sklaverez, ne zilezas ket hent ar wirionez.
3. En heveleb doare ma tarnaoue bemdez kement ha helle da gaoud etre ar re euz e vroiz, hag euz e vreuriezh, a oa sklaved gantañ.
4. Hag evitañ da veza ar yaouanka euz ar re oll euz a vreuriezh Neftali, ne reas koulskoude netra a vibiliuz en e oberiou.
5. En diwez pa'z ee ar re all oll etrezeg al leueou aour en-doa greet Jeroboam, roue Izrael, eñ e-unan a dehe diouz strollad ar re all oll.
6. Hogen mond a ree da Jeruzalem e templ an Aotrou ; hag eno eh azeule an Aotrou, Doue Izrael, hag e kinnige gand lealded e oll breveudiou hag e zeogou.
7. Hag en trede bloaz e tarnaoue e oll zeog etre an distroidi hag an diavêzidi.
8. Kement-se, ha traou all heñvel ouz lezenn Doue, a zevenas, hag eñ c'hoaz bugel.
9. Hogen pa oe deuet da zen, e kemeras da wreg Anna, euz e vreuriezh ; hag en-doe anezi eur mab, da behini e roas e ano.
10. Hag eñ a zeskas dezañ, hag eñ bihanig, douja Doue, hag en em vired diouz ar pehed.
11. Hogen pa oe kaset e sklaverez e kêr Niniv, eñ hag e wreg, hag e vab, hag e oll vreuriezh ;
12. Pa zebre ar re all oll kigou ar Jentiled, eñ a viras e ene glan, ha n'en em zaotras biskoaz gand o bouedou.
13. Hag o veza m'en-doe koun euz an Aotrou a-greiz e galon, Doue hel lakaas da gavoud trugarez dirag Salmanasar, ar roue,
14. Pehini a roas dezañ ar galloud da vond el leh ma karje, ha da ober ar pez a garje.
15. Kerzoud a ree eta etrezeg ar re oll a oa e sklaverez hag e roe dezo aliou mad.
16. Eun deiz e teuas da Rages, kêr d'ar Vedied, hag eñ en-doa deg talant arhant, a zeue euz ar roou en-doa greet ar roue dezañ.
17. Hag e-touez an niver braz euz ar re euz e ouenn, o weloud penaoz Gabelus, pehini a oa euz e vreuriezh, en em gave ezommeg, e roas dezañ ar somm arhant-se war e zin¹⁹³.
18. Hogen pell amzer goude, pa oe maro Slamanasar, ha pa rene en e leh Sennacherib, e vab, pehini a gasae kaer bugale Izrael,
19. Tobias a yee bemdez da weloud e oll gerent, hag a zihlahare anezo, hag a ranne etrezo kement ha ma helle euz e vadou.
20. D'ar re o-doa naon, e roe da zebri ; d'ar re a oa en noaz, e roe dillad, hag ar re varo hag ar re lazet a lakae er bez gand preder.
21. En diwez pa zistroas ar roue Sennacherib euz ar Judea, o tehoud diouz ar gouli en-doa Doue digoret warnezañ, en abeg d'e zroug-prezeg , hag o veza savet droug ennañ, ma lazas kalz a vugale Izrael, Tobias a vezie o horvou.

¹⁹³ ar somm arhant-se war e zin : ? e roas dezañ an oll arhant-se, goude m'en-doa sinet (?)

22. Kerkent ma oe lavaret kement-se d'ar roue, e kemennas e laza, hag e lamas digantañ e oll vadou.
23. Hogen Tobias, o veza bet tennet pep tra digantañ, a dehas gand e vab hag e wreg : hag en em guzas, rag kalz e oa karet.
24. Hogen pemp deiz ha daou-ugent goude, e oe lazeta ar roue gand e vibien ;
25. Ha Tobias a zistroas d'e di ; hag e oll vadou a oe distaolet dezañ.

II. Pennad.

Bezia a ra Tobias ar re varo. Dall e oa.

1. Goude kement-se, o veza ma oa eun deiz gouel d'an Aotrou, Tobias a lakaas aoza eur banvez braz en e di ;
2. Hag e lavaras d'e vab : Kee, ha degas amañ eu re bennag euz or breuriez, pere a zouj Doue, evid ma vanvezit ganeom.
3. E vab a yeas, ha pa oe distroet e lavaras dezañ, penaoz unan euz a vugale Izrael a oa bet lazeta, hag a oa gourvezet war ar ru. Raktal Tobias a zavas diouz taol, hag o tilezel e bred, ez eas war- yun etrezeg ar horv :
4. Hag o kemeroud anezañ, hen dougas e kuz en e di, evid e vezia gand preder, pa vije kuzet an heol.
5. Ha p'en-doe kuzet ar horv, e tebras e voued gand glahar, ha en eur grenna ;
6. O kaoud soñj euz ar ger-ze, an-doa lavaret an Aotrou, dre henou Amos, ar profed : Ho teziou gouel a droy e daelou hag e kañv.
7. Pa oe eta kuzet an heol, ez eas, hag e vezias anezañ.
8. Hogen e oll gerent a damalle anezañ, o lavaroud : Dija evid kement-se eo bet gourhemennet da laza, hag a-veh out bet tehet diouz ar maro, ha c'hoaz e veziez ar re varo ?
9. Hogen Tobias, pehini a zouje muih Doue eged ar roue, a skrape korvou ar re lazeta, hag o huze en e di, hag o bezie e-kreiz an noz.
10. C'hoarvezoud a reas eun deiz penaoz o veza skuiz o vezia ar re varo, e tistroas d'ar gêr, e hourvezas e-tal eur voger, hag e kouskas :
11. Ha pa edo kousket, e kouezas, euz a eun neiz gwennilied, kaoh tomm war e zaoulagad, hag e teuas da veza dall.
12. Doue a aotreas e c'hoarvezje an dra-ze gantañ, evid ma vije roet da skwer e habaskded d'ar re e houde, evel hini an den santel Job.
13. Hag o veza m'en-doa doujet Doue a-vihanig, ha m'en-doa miret e hourhemennou, ne voudas ket ouz Doue, dre m'en-doa e skoet gand an dallentez ;
14. Hogen stard e chomas e doujañs Doue, oh e drugarekaad e oll zeziou e vuhez.
15. Rag evel ma heskine an den santel Job, ar roueed, evel-se e gerent hag e gerent-nez a ree goap euz e vuhezegez, o lavaroud :
16. Peleh ema da hed, evid pehini e reez aluzennou, hag e veziez ar re varo ?
17. Hogen Tobias a damalle anezo, o lavaroud : Na gomzit ket evel-se :
18. Rag ni a zo mibien ar zent ; hag e hedom ar vuhez-se, a dle Doue rei d'ar re, pere na zilezont morse ar feiz ennañ.

19. Hogen Anna, e wreg, a yee bemdez da ober lien, hag hi a zegase ar pezh a helle da hounid gand labour he daouarn. Hag i o veza bet roet dezi eur menn-gavr, a zegasas anezañ d'ar gêr.
20. Pa glevas heh ozah anezañ o veia¹⁹⁴, e lavaras : Likit evez na ve bet laeret, distaolit eñ d'e vistri, rag n'eo ket aotreet deom debri eun dra laeret, pe lakaad an dorn warnezañ.
21. Hag e wreg o sevel droug enni, a lavaras : Gwan anad eo da hed, ha da netra eo deuet da aluzennou.
22. Hag evel-se, hag en eun doare all, e ree-hi tamallou dezañ.

III. Pennad.

Pedenn Tobias ha Sara, merh Raguél.

1. Neuze Tobias a hirvoudas, hag a zeuas da bedi gand daerou,
2. O lavaroud : Aotrou, te a zo gwirion, ha da oll varnedigeziou a zo hervez ar gwir, ha da oll heñchou eo trugarez, ha gwirionez, ha barnedigez.
3. Ha bremañ, Aotrou, az-pezh koun ahanon : na gemer ket a veñjañs euz va fehejou ; ha na zegas ket da eñvor va gwallou, pe re va zadou.
4. O veza n'on-eus ket sentet ouz da gelennoù, rag se eo om bet roet d'ar gwaskerezh, ha d'ar sklaverezh, ha d'ar maro, ha da hoaperezh, ha da damall an oll vroadou, e-touez pere eh-eus or skignet.
5. Ha bremañ, Aotrou, eo braz da varniou, o veza n'om ket en em renet hervez da gelennoù, ha n'on-eus ket kerzet gand eeunder dirazout.
6. Ha bremañ, Aotrou, gra din hervez da youl, ha gourhemenn ma vezo degemeret va ene e peoh ; rag gwell eo ganen mervel eged beva.
7. En heveleb deiz e c'hoarvezas penaoz Sara, merh Raguél, euz a Ragez, kêr d'ar Vedied, a glevas eun tamall a-berz unan euz a vitizien he zad,
8. En abeg ma oa bet dimezet da zeiz gwaz, ha ma oant bet lazetañ gand eun diaoul anvet Asmodeüs, kerkent ha ma oant eet d'he havoud.
9. Pa groze eta ar plah evid eur gwall he-doa greet, houmañ a lavaras dezi : Doue ra viro na welim biken ahanout, na mab, na merh, war an douar, lazerezh da ezech.
10. Ha ne fell ket dit va laza ivez, evel ma eh-eus lazetañ kent seiz ozah ? Pa glevas kement-se, Sara a bignas d'ar gambr uhella euz he zi, hag a-hed tri devez ha teir nozvez ne zebras na ne evas.
11. Hag o pedi stard, e houlennas digand Doue gand daerou, ma tieubje anezi euz an tamall-ze.
12. Hogen en trede deiz, e peurhreas he fedenn, hag e vennigas an Aotrou,
13. O lavaroud : Benniget ra vezo da ano, Doue on tadou, pehini, goude beza buanekaet, a ra trugarez, hag e amzer ar hlahar a zistaol o fehejou d'ar re a bed ahanout.
14. Etrezeg ennout, Aotrou, e troan va daoulagad, warnout e taolan va daoulagad.
15. Me a houlenn diganez, Aotrou, ma tieubi ahanon euz an tamall-ze, pe ma tenni ahanon diwar an douar.

¹⁹⁴ o veia :? . Marteze "o veilla".

16. Te a oar, Aotrou, penaoz n'em-eus biskoaz c'hoantaet eur gwaz, hag em-eus miret va ene glan euz a beb gwall youl.

17. Biskoaz n'on en em vesket gand ar hoarierien, na n'em-eus darempredet ar re a gerz er skañvbennigez.

18. Ma em-eus aotreet kemeroud eur gwaz, eo dre da zoujañs, ha n'eo ket dre va droug-youl.

19. Ha marteze on bet dizellezeg euz ar re a zo bet roet din, pe i n'int ket bet dellezeg ahanon, o veza marteze ma eh-eus va miret evid eur gwaz all.

20. Rag n'eo ket da guzul e galloud an den.

21. Hogen kement hini a veul ahanout, a oar ervad penaoz mar bez arnodet a-zoug e vuhez, e vezo kurunet ; mar bez glaharet, e vezo dieubet ; mar bez kastizet, e hello gounid da drugarez.

22. Rag ne zegemerez ket a zudi en or glahariou ; goude an arne, e tegasez ar sioulded ; ha goude an daerou hag an huanadou, e roez al levenez.

23. Doue Izrael, ra vezo benniget da ano da viken.

24. En heveleb amzer e oe klevet ouz an diou bedenn-ze dirag gloar an Doue braz ;

25. Ha Rafael, êl santel an Aotrou, a oe kaset, evid o farea o-daou, evel ma oa bet degaset o fedennou en heveleb amzer dirag an Aotrou.

IV. Pennad.

Aliou Tobias d'e vab.

1. Tobias eta o kredi penaoz diouz e bedenn e helle mervel, a halvas etrezeg ennañ e vab Tobias,

2. Hag a lavaras dezañ : Selaou, va mab, geriou va genou, ha laka i en da galon evel eun diazez.

3. Pa en-devezo Doue degemeret va ene, laka bezia va horv ; hag enor da vamm keit ha ma vevo :

4. Rag te a dle kaoud koun a gement gloaz he-deus gouzañvet en abeg dit pa edos en he hov.

5. Ha pa he-devezo-hi kaset he buhez da benn, laka he bezia em hichenn.

6. E oll zeziou da vuhez az-pezh Doue en da spered ; ha diwall na ri biken pehed ebed, ha na dorri kelennou an Aotrou, on Doue.

7. Gand da vadou gra an aluzenn, ha na zistro ket da zaoulagad diouz paour ebed : rag evel-se ivez an Aotrou ne zistroio ket e zaoulagad diouzit.

8. Hervez ma helli, bez trugarezuz.

9. Ma eh-eus kalz, ro kalz ; ma eh-eus nebeud, laka evez da rei nebeud a galon vad.

10. Rag evel-se e tastumi dit eun teñzor hag eur gober evid an deiz a ezomm :

11. Rag an aluzenn a denn euz a beb pehed hag euz ar maro, hag a vir ouz an ene n'az ay en deñvalijenn.

12. Eur fiziañs vraz e vezo an aluzenn dirag an Doue uhel-braz, evid kement hini en-devezo he greet.

13. En em vir, va mab, diou pep gadaliez, ha nemed gand da wreg hepken, na ri netra hag a vez eur gwall e ober.

14. Na lez morse ar rogoni da zevel en da vennoz pe en da her : rag enni eo en-deus kavet peb droug e benn kenta.

15. Piou bennag en-devezo greet eun dra evidout, ro raktal e hobr dezañ ; ha chomet morse gobr da hopraer en da di.

16. Na ra ket da eun all ar pez na garfes ket a ve greet dit.

17. Debr da vara gand ar beorien, ha gand ar re o-deus naon, ha golo gand da zillad ar re a zo en noaz.

18. Laka da vara hag da win war bez an den gwirion, ha na zebr, ha na ev anezo gand ar beherien.

19. Goulenn kuzul bepred digand eun den fur.

20. E peb amzer, meul Doue, ha goulenn digantañ ma reno da heñchou, ha ma chomo da oll guzuliou ennañ¹⁹⁵.

21. Rei a ran ivez da anaoud dit, va mab, penaoz, pa ne oas c'hoaz nemed eur bugel, em-eus roet deg talant arhant da H/Gabelius, pehini a chom e Ragez, kêr d'ar Vedeied, hag em-eus e skrid etre va daouarn.

22. Rag se, gwel penaoz e helli mond d'e gavoud, ha degemeroud diganatañ ar somm arhant-se, ha disteurrel dezañ e skrid.

23. N'az-pezh ket a aon, va mab ; paour om evid gwir ; hogen kalz a vadou or-bezo, mar doujom Doue, mar pellaom diouz pep pehed, ha mar greom ervad.

V. Pennad.

Gand an êl Rafael ez a Tobias.

1. Neuze Tobias a respontas d'e dad, hag a lavaras : Va zad, kement eh-eus gourhemennet din a rin ;

2. Koulskoude ne ouzon ket penaoz e hellin tenna an arhant-se ; ne anavez ket ahanon, ha ne anavezan ket anezañ. Pe arouez a roin-me dezañ ? Ne ouzon ket zoken dre be hent ez eer d'ar vro-ze.

3. Neuze e dad a respontas : E skrid em-eus etre va daouarn ; kerkent ha ma e ziskouezi dezañ, e zistaolo dit.

4. Hogen kee bremañ, ha klask unan bennag feal, a hello mond ganez, oh e baea euz e boan ; evid ma vezo roet dit an arhant-se, endra ma on beo.

5. Neuze Tobias o veza eet er-mêz, a gavas eun den yaouank kaer, hag eñ gourizet, hag e doare eun den dare da vond en hent.

6. Hag o veza ne ouie ket penaoz e oa eun Êl Doue, e saludas anezañ, hag e lavaras dezañ : A beleh out-te, den yaouank mad ?

7. Hag eñ a lavaras : Euz a vugale Izrael. Ha Tobias a lavaras dezañ : Anaoud a rez-te an hent a gas da vro ar Vedied ?

8. Hag hemañ a lavaras : E anaoud a ran ; hag aliez em-eus greet an oll heñchou-ze ; ha bet on o chom e ti Gabelius or breur, pehini a chom e Ragez, kêr d'ar Vedeied, a zo savet war menez Ekbatan.

9. Ha Tobias a lavaras dezañ : Va gortoz amañ, me az-ped, ken n'em-bezo danevellet kement-mañ d'am zad.

¹⁹⁵ ma chomo da oll guzuliou ennañ : ?

10. Neuze Tobias o veza deuet en ti, a zanevellas kement-se oll d'e dad, pehini, souezet-braz euz an dra-ze, a lavaras d'e vab ma lakaje hemañ da zond en ti.

11. Hag hemañ o veza deuet e-barz, a zaludas Tobias, hag a lavaras dezañ : Ra vezo bepred al levenez ganez.

12. Ha Tobias a lavaras : Pe levenez a hell beza din, me pehini a zo bepred en deñvalijenn, ha ne welan ket goulou an neñv ?

13. Hag an den yaouank a lavaras dezañ : En em galoneka ; tost eo an amzer e pehini e tle Doue da barea.

14. Neuze Tobias a lavaras dezañ : Ha te a hello kas va mab da di Gabelus, e kêr Ragez, e bro ar Vedeied ? Ha pa vezi distroet, e roin dit da hobr.

15. Hag an Êl a lavaras dezañ : E gas hag e zegas a rin dit.

16. Ha Tobias a lavaras dezañ : Lavar din, me az-ped, a be tiad, hag a be breuriez out-te ?

17. Hag an Êl Rafael a lavaras dezañ : Ha tiad ar gopraer eo a dle¹⁹⁶ kas da vab, pe ar gopraer e-unan pehini a glaskez ?

18. Hogen gand aon na zeufen d'az nehi ; me eo Azarias, mab Ananias ar braz.

19. Ha Tobias a lavaras dezañ : Euz a eur ouenn vraz out. Hogen na zavet ket a zroug ennout, ma em-eus bet c'hoant da anaoud da ouenn.

20. Hag an êl a lavaras dezañ : Yah e kasin da vab, ha yah hen degasin dit.

21. Hogen Tobias a lavaras : Kerzit ervad ; ha bezet Doue en hoh ergerz ; ha bezet e êl ganeoh.

22. Neuze goude beza aozet pep tra evid an hent, e lavaras Tobias kenavezo d'e dad¹⁹⁷ ha d'e vamm ; hag ez ejont o-daou en hent.

23. Ha pa oent eet kuit, ar vamm en em lakaas da ouela, ha da lavaroud : Baz or hozni eh-eus tennet diouzom, hag he fellaet eh-eus.

24. A youl Doue ne vije bet biskoaz deom an arhant-se, evid pehini eh-eus e gaset.

25. A-walh e oa deom an nebeud or-boa, evid ma selljem evel eur madou braz, kaoud or mab ganeom.

26. Ha Tobias a lavaras dezi : Na ouel ket ; or mab a ray e ergerz, ha yah e tistroy etrezeg ennom, ha da zaoulagad e welo.

27. Rag me a gred penaoz Êl mad Doue a ya gantañ, hag a ren kement a zell outañ, en heveleb doare ma tistroy d'or havoud gand levenez.

28. O klevoud kement-se, e vamm a ehanas da ouela, hag a davas.

VI. Pennad.

Tobias a gemer eur pesk. Petra a dle da ober ar re a zimez.

1. Tobias en em lakaas eta en hent, hag ar hi war e lerh ; hag an noz kenta e chomas en eul leh, war harz ar ster Tigris.

2. Hag o veza eet evid gwalhi e dreid, e teuas er-mêz euz an dour eur pesk braz-direiz evid e lonka.

¹⁹⁶ a dle : a dlean.

¹⁹⁷ kenavezo d'e dad : galleg.

3. Tobias, spontet-braz, en em lakaas da harmi, ha da lavaroud : Aotrou, en em deurel a ray warnon.

4. Hag an êl a lavaras dezañ : Kemer eñ dre e skouarn, ha tenn eñ etrezeg ennout. Ha p'en-doe e hreet, e sachas anezañ war ar seh ; hag ar pesk a zeraouas lammedikad ouz e dreid.

5. Neuze an Êl a lavaras dezañ : Divouzell ar pesk-se ha kemer evidout ar galon, ar vestl hag an avu anezañ ; rag louzou mad a heller da ober ganto.

6. Goude m'en-doe greet kement-se, e rostas lod euz ar hig a gasjont ganto en hent, hag e salljont an dilerh, a dlee beza a-walh evito, ken na vijent deuet da Ragez, kêr d'ar Vedied.

7. Neuze Tobias a reas eur goulenn ouz an Êl, o lavaroud : Azarias, va breur, lavar din, me az-ped, pe louzou a heller da ober gand ar pez zo bet fellet dit e virjem euz ar pesk ?

8. Hag an Êl a lavaras dezañ : Ma lakaez eun tamm euz e galon war ar glaou, ar moged a zav diouti a gas kuit a beb gouenn diaoulou, daoust pe euz a eur gwaz, daoust pe a euz vaouez ; en heveleb doare ne dostaont mui outo.

9. Hag an avu a zo mad evid larda an daoulagad war bere ema ar banne, hag i a zeu da veza yah gantañ.

10. Ha Tobias a lavaras dezañ : Peleh e fell dit ez ajem da chom ?

11. Hag an Êl a lavaras dezañ : Amañ ez eus eun den anvet Raguel, a zo kar dit, hag euz da vreuriezh : eur verh en-deus anvet Sara, hag hi pennherez, rag n'en-deus na paotr, na merh all nemeti.

12. E oll vadou a dle degouezoud dit, ha red eo dit he hemeroud da wreg.

13. Goulenn hi eta digand he zad, hag eñ he roy dit da wreg.

14. Neuze Tobias a lavaras dezañ : Klevet em-eus penaoz he-deus bet seiz ozah, ha penaoz int bet marvet ; hogen klevet em-eus ivez penaoz int bet lazet gand eun diaoul.

15. Aon em-eus eta na hoarvezfe kement-se ganen ; ha pa on eur mab pennher, na zeujen da hlahari va zud en o hozni, haq d'o lakaad da ziskenni er bez.

16. Neuze an Êl Rafael a lavaras dezañ : Selaou ahanon, hag e tiskouezin dit war bere en-deus galloud an diaoul.

17. Ar re pere pa zimezont a bella Doue euz o halon hag euz o spered, hag en em ro d'o gwall-youl, evel eur marh pe eur mul, pere n'o-deus ket a skiant ; war ar re-ze en-deus galloud an diaoul.

18. Hogen te, pa vezi dimezet gand houmañ, ha pa vezi eet en he hambr, bez ganti evel breur ha c'hoar, a-hed tri devez, ha n'en em ro nemed d'ar bedenn ganti.

19. En noz-se, laka en tan avu ar pesk, hag e laki an diaoul da dehi.

20. En eil nozvez e vezi degemeret e kevredigez an tadou braz santel.

21. En drede nozvez e tegemeri ar vennoz az lakay da henel mibien leun a yehed.

22. Ha goude ma vezo tremenet an drede nozvez, e kemeri ar plah yaouank e doujañs an Aotrou, ha gand ar c'hoant da gaoud bugale, kent eged gand ar gwall-youl ; evid m'az-pezo lod e bennoz Doue pa'z-pezo mibien euz a ouenn Abraham¹⁹⁸.

VII. Pennad.

¹⁹⁸ kent eged gand ar gwall-youl ; evid m'az-pezo lod e bennoz Doue pa'z-pezo mibien euz a ouenn Abraham : ?

Tobias a houlenñ Sara, merh Raguel, da wreg.

1. Goude-ze ez ejont da di Raguel ; ha Raguel o degemeraz gand levez.
2. Ha pa zellas Raguel ouz Tobias, e lavaraz da Anna e wreg : Pegen heñvel eo an den yaouank-se ouz va henderv !
3. Goude-ze e lavaraz dezo : A beleh oh-hu, or breudeur yaouank ? Hag i a lavaraz : Euz a vreuriezh Neftali om, euz a sklaved Niniv.
4. Ha Raguel a lavaraz dezo : Anaoud a rit-hu Tobias, va breur ? Hag i a lavaraz : E anaoud a reom.
5. Hag evel ma lavare Raguel kalz a vad diwar-benn Tobias, eun Êl a lavaraz dezo : Tobias a behini e houlenne kelou diganeom eo tad hemañ.
6. Neuze Raguel a dostaas outañ, hag a bokas dezañ gand daelou ; hag o ouela war e houzoug,
7. E lavaraz dezañ : Benniget ra vezi, va mab, rag te a zo mab da eun den mad, da eun den ar gwella.
8. Hag Anna e wreg, ha Sara o merh, a ouelas ivez.
9. Goude al lavariou-ze, e hourhemennas Raguel ma vije lazet eun dañvad, ha ma vije aozet eur banvez. Hag evel ma o fede d'en em lakaad ouz taol,
10. Tobias a lavaraz : Ne zebrin, ha ne evin amañ hirio, ken n'az-pezo a-raog aotreet din va goulenn, ha roet da her e roi din da verh Sara da wreg.
11. Raguel o klevoud kement-se a oe spontet-braz, o veza ma ouie petra a oa c'hoarvezet gand ar seiz ozah a oa eet d'he havoud ; hag eñ a zeuz da gaoud aon na hoarvezfe kement-se gand hemañ ; hag o veza ma oa en arvar, ha ne roe respont ebed d'ar pezh a oa goulennet digantañ,
12. E lavaraz an Êl dezañ : N'az-pezh ket a aon da rei da verh da hemañ pehini a zouj Doue : rag dleet eo da verh dezañ da wreg ; rag se eo n'en-deus ket eun all gallet he havoud.
13. Neuze Raguel a lavaraz : Ne arvaran ket ket penaoz en-deus Doue degemeret dirazañ va fedennou ha va daelou :
14. Ha me a gred penaoz en-deus o lakaet da zond d'am havoud, evid ma timezje-hi gand unan euz he herentiezh, hervez lezenn Moizez ; ha dre ze n'az-pezh ket a arvar e rojen dit va merh.
15. Hag o kemeroud dorn dehou e verh, e lakaas anezañ e dorn dehou Tobias, o lavaroud : Doue Abraham, ha Doue Izaak, ha Doue Jakob, ra vezo ganeoh ; ra unvano e-unan ahanoh ; ha re zeveno e vennoz warnoh.
16. Hag o veza kemeret paper, e reizjont ar skrid a briedelez.
17. Goude-ze e rejont banvez, o veuli Doue.
18. Raguel a halvaz Anna, e wreg, hag a hourhemennas dezi ma aozje eur gambr all.
19. Hag hi a gasas enni Sara he merh, pehini en em lakaas da ouela.
20. Hag he mamm a lavaraz dezi : Kemer kalon vad, va merh : Aotrou an neñv ra roy dit levez goude an oll zoan eh-eus bet.

VIII. Pennad.

Tobias ha Sara a bed 'hed an noz kenta euz o eured.

1. Hogen goude m'o-doe koaniet, e kasjont Tobias etrezeg enni.
2. Ha Tobias o kaoud koun euz ar pezh en-doa lavaret an Êl dezañ, a dennas euz e zah lod euz a avu ar pesk, hag e lakaas anezañ war glaou beo.
3. Neuze an Êl Rafael a gemeras an diaoul, hag a ereas anezañ e distro an Ejipt uhella.
4. Goude-ze Tobias a roas an ali-mañ da Zara, o lavaroud : Sara, sav, ha pedom Doue hirio, ha warhoaz, ha goude warhoaz : rag a-hed an teir nozvez-se e tleom en em unvani gand Doue : ha goude an drede nozvez, e vezim en or priedelez.
5. Rag ni a zo mibien¹⁹⁹ ar zent, ha ne dleom ket dimezi evel ar baganed pere ne anavezont ket Doue.
6. Sevel a rejont eta o-daou, hag e pedjont stard kevred Doue, ma roje ar yehed dezo.
7. Ha Tobias a lavaras : Aotrou, Doue on tadou, ra vezi meulet gand an neñv, hag an douar, hag ar mor, hag ar feunteuniou, hag ar steriou, ha gand an oll grouadurien dit a zo enno.
8. Greet eh-eus Adam gand fank an douar, hag eh-eus roet Eva da eil dezañ.
9. Ha bremañ, Aotrou, te a oar penaoz n'eo ket dre hadaliez e kemeran va hoar²⁰⁰ da wreg, hogen hepken gand ar c'hoant da lezel bugale war va lerh, gand pere e vezo meulet da ano da viken.
10. Sara a lavaras ivez : Az-pezh truez ouzom, Aotrou, az-pezh truez ouzom, ma vezim kevred koz ha yah.
11. Hag e tro kan ar hillog, e hourhemeneas Raguel d'e vevelou dond d'e gavoud ; hag ez ejont gantañ evid toulla eur bez.
12. Rag eñ a lavare : C'hoarvezet e vezo marteze gand hemañ evel ma eo bet c'hoarvezet gand ar seiz gwaz all a zo bet ganti.
13. Ha goude m'o-doe aozet ar bez, Raguel o veza distroet etrezeg e wreg, a lavaras dezi :
14. Kas unan euz da blahed²⁰¹ evid gweloud mar deo maro²⁰², ma e likiin er bez a-barz ma luho an deiz.
15. Hag houmañ a gasas unan euz he flahed, pehini o veza eet er gambr, o havas leun a yehed, ha kousket kevred o-daou.
16. Hag o veza distroet, e roas ar helou mad-ze dezo. Neuze Raguel hag Anna, e wreg, a veulas an Aotrou,
17. Hag a lavaras : Da veuli a reom, Aotrou, Doue Izrael, o veza n'eo ket bet c'hoarvezet evel ma or-boa mennet.
18. Rag trugarezuz out bet en or heñver, hag eh-eus pellaet diouzom an enebour a heskine ahanom.
19. Ha truez eh-eus bet ouz daou bennher. Gra, Aotrou, ma veulint ahanout muih-mui, ha ma kinnigint dit eur sakrifis a veuleudi evid ar yehed eh-eus roet dezo ; ma anavezo an oll vroadou penaoz n'eus Doue all ebed nemedout en douar oll.
20. Ha Raguel a hourhemennas rak-tal d'e vevelou, leunia a-barz an deiz ar bez o-doa toullet.

¹⁹⁹ mibien : ? "bugale".

²⁰⁰ va hoar : va henitevez e gwirionez.

²⁰¹ da blahed : da vitizien.

²⁰² mar deo maro : hag-eñ eo maro.

21. Gourhemenni a reas ivez d'e wreg ma aozje eur banvez, hag an oll boued a oa red evid tud a dlee mond en hent.

22. Lakaad a reas laza diou vuoh lard, ha pevar zourh evid aoza eur banvez evid e oll amezeien hag e vignoned.

23. Raguel a bedas stard Tobias da chom gantañ a-hed diou zizun.

24. Raguel a roas da Dobias an hanter euz an oll vadou en-doa ; hag e reas eur skrid, evid ma teuje en e gerz goude o maro, an hanter all a chome ganto.

IX. Pennad.

An Êl a ya da gaoud Gabelus, pehini a zeu da eured Tobias.

1. Neuze Tobaias a halvas an Êl, pehini a venne e oa eun den ; hag e lavaras dezañ : Azarias, va breur, me az ped da zelaoui va geriou.

2. Ha pa en em rojen da sklav dit, ne rajen ket c'hoaz a-walh evid kement eh-eus greet evidon.

3. Koulskoude da bedi a ran da gemeroud ganez al loened hag an dud a zo red, ha da vond da Ragez, kêr d'ar Vedeied, da di Gabelus ; hag e tistaoli dezañ e skrid, hag e kemerer arhant digantañ, hag e pedi anezañ da zond d'am eured.

4. Rag te a oar da-unan penaoz va zad a niver an deizioù ; ha mar daelan eun deiz ouspenn, e vezo glaharet e ene.

5. Gwelet eh-eus ivez peger stard en-deus Raguel va fedet da chom amañ, ha penaoz ne hellan ket disprizoud e bedenn.

6. Neuze Rafael o veza kemeret gantañ pevar euz a vevelou Raguel, ha daou gañval, a yeas da Ragez, kêr d'ar Vedeied ; hag o veza kavet Gabelus, e tistaolas dezañ e skrid, hag e kemeras digantañ an oll arhant.

7. Danevella a reas dezañ kement a oa c'hoarvezet gand Tobias ar mab ; hag e lakaas anezañ da zond gantañ d'e eured.

8. Gabelus o veza deuet da di Raguel, a gavas Tobias ouz taol ; hag hemañ o sevel, e pokjont an eil d'egile : ha Gabelus a ouelas, hag a veulas Doue,

9. Hag a lavaras : Ra vennigo ahanout Doue Izrael, o veza ma out mab da eun den gwirion, da eun den mad, da eun den a zouj Doue, hag a ro aluzennou.

10. Ha ra vezo benniget da wreg, hag ho tadou :

11. Ha ra welot ho mibien, ha mibien ho mibien beteg an drede hag ar bevare gouenn ; ha ra vezo benniget ho kouenn gand Doue Izrael, pehini a ren a gantved da gantved.

12. Hag an oll o veza lavaret Amen, en em lakajont ouz taol ; hogen e-pad banvez an eured e virjont c'hoaz doujañs an Aotrou.

X. Pennad.

Neh tad ha mamm Tobias.

1. Hogen evel ma talee Tobias, dre an abeg d'e eured, e dad en em nehas, hag a lavare : Pe evid tra e tale va mab, perag eo eñ dalhet eno ?

2. Ha maro e ve Gabelus, ha ne hellfe den disteurel an arhant dezañ ?

3. Dond a reas eta d'en em hlahari, hag Anna e wreg gantañ ; hag en em lakajont o-daou da ouela, o veza ne oa ket distroet o mab d'an deiz merket.
4. Hogen e vamm a ouele heb gelloud en em zihalhari, hag a lavare : Allaz ! allaz ! va mab ! Perag on-eus-ni da gaset ker pell, te, goulou on daoulagad, baz or hozni, frealzidigez or buhez, ged on nested ?
5. Pa or-boa pep tra ennout hepken, ne dleem ket da bellaad diouzm.
6. Ha Tobias a lavare dezi : Tav, ha n'en em hlahar ket ; yah eo or mab ; leal-braz eo an den-ze gand pehini on-eus e gaset.
7. Hogen ne helle ket hi en zihlahari e doare ebed ; hag o vond bemdez ermêz euz he zi, e selle tro-war-dro, hag ez ee en oll heñchou dre bere e venne-hi e hellfe distrei, evid gelloud e weloud a-bell pa zistroje.
8. Koulskoude Raguel a lavaras d'e vab-kaer : Chom amañ, ha me a gaso da Dobias da dad kelou euz da yhed.
9. Ha Tobias a lavaras dezañ : Me a oar penaoz bremañ va zad ha va mamm a niver an deziou, ha penaoz int gwall-nehed.
10. Pa en-doe Raguel pedet-kaer Tobias, ha pa ne felle ket da hemañ e zelaoui e doare ebed, e lakaas Sara etre e zaouarn, gand an hanter euz e oll dra, euz e baotred²⁰³, euz e blahed²⁰⁴, euz e dropellou, euz e gañvaled, euz e zaout, hag euz a galz a arhant ; hag e lezel a reas da vond kuit leun a yhed hag a levenez.
11. O lavaroud : Ra vezo Êl santel an Aotrou en hoh hent, ha ra gaso ahanoh dizroug ha yah : ha ra gavot pep tra ervad war-dro d'ho tud ; ha ra welo va daoulagad ho pugale a-barz ma varvin.
12. Neuze an tad hag ar vamm a gemeras o merh, a bokas dezi, hag he lezas da vond.
13. Oh alia anezi da enori he zad-kaer, da garoud heh ozah, da reiza he ziegez, da rena he zi, ha d'en em viroud heh-unan didamall.

XI. Pennad.

Aliou Rafael da Dobias.

1. Ha pa zistroent, e teujont an unnegved deiz da Haran, a zo war an hent o vond da Niniv.
2. Hag an Êl a lavaras : Tobias, va breur, te a oar e pe zoare eh-eus lezet da dad.
3. Mar fell eta dit, ez aim a-raog, ha da zervijerien a zeuy gouestad war ol lerh, gand da wreg, ha gand da loened.
4. Ha p'o-doe lakaet en o fenn mond evel-se, Rafael a lavaras da Dobias : Kas ganez euz a vestl ar pesk ; rag ezomm az-pezo anezi. Tobias a gemeras eta ar vestl-se, hag i en em lakaas en hent.
5. Hogen Anna a azeze bemdez war harz an hent war lein eur menez, a beleh e helle gweloud a-bell.

²⁰³ e baotred : e vevelien.

²⁰⁴ ²⁰⁴, euz e blahed : e vitizien.

6. Hag evel ma selle ahano ma²⁰⁵ ne zeue ket he mab, e welas anezañ a-bell, hag hi e anavezaz raktal o tond ; hag oh en em lakaad da redeg, e kasas ar helou d'heh ozah, o lavaroud : Setu da vab o tond.

7. Ha Rafael a lavaraz da Dobias : Kerkent ha ma vezi eet en da di, azeul an Aotrou, da Zoue, hag oh e drugarekaad, tosta ouz da dad, ha pok dezañ.

8. Ha raktal laka ouz e zaoulagad euz ar vestl pesk a zougez ganez ; rag gouez penaoz kerkent e tigo e zaoulagad, hag e welo da dad goulou an neñv, hag e vezo leun a levenez pa welo ahanout.

9. Neuze ar hi pehini a oa eet en hent ganto, a yeas en o raog, hag evel pa vije bet eur hannad, e tiskoueze e levenez gand e lidou, hag oh heja e lost.

10. Ha tad Tobias hag eñ dall, a zavas, hag en em lakaas da bafala gand e dreid ha da redeg ; hag o kemeroud dorn eur paotr, ez eas da ziambrouga e vab.

11. Hag o tegemeroud anezañ e pokas dezañ, hag e wreg ivez, hag e teraoujont o-daou da ouela gand levenez.

12. Ha goude m'o-doe azeulet Doue, ha trugarekaet anezañ, eh azezjont.

13. Neuze, Tobias, o kemeroud euz a vestl ar pesk, a lakaas anezi ouz daoulagad e dad.

14. Ha p'en-doe gortozet war-dro eun hanter eur, e teraouas dond er-mêz euz e zaoulagad eur grohennenn wenn e doare eur gwenn-vi.

15. Tobias o kregi enni he sachas euz e zaoulagad, ha raktal e teuas ar gweled dezañ.

16. Hag i a veulas Doue, eñ, hag e wreg, hag ar re oll a anaveze anezañ.

17. Ha Tobias a lavare : me a vennig ahanout, Aotrou, Doue Izrael, o veza ma eh-eus va hastizet, ha ma eh-eus va fareet ; ha setu e welan va mab Tobias.

18. Sara, gwreg e vab, a zeuas ivez seiz devez goude, gand e oll dud leun a yehed, hag he loened, hag he hañvaled, ha kalz a arhant euz heh argourou ; hag ivez an arhant a oa bet distaolet gand Gabelus.

19. Hag eñ a zanevellas d'e dud an oll vadoberiou en-doa greet Doue dezañ dre an den a oa eet gantañ.

20. Ac'hior ha Nabat, kendirvi Tobias, a zeuas d'en em laouennaad gantañ, ha d'e veuli euz a gement en-doa greet Doue en e geñver.

21. Hag i en em laouennaas, oh ober banvez a-hed seiz devez.

XII. Pennad.

Steuzia a ra Rafael dirag Tobias hag e vab.

1. Neuze Tobias a halvas e vab, hag a lavaraz dezañ : Petra a hellom-ni da rei d'an den santel-ze a zo bet eet ganez ?

2. Ha Tobias a lavaraz d'e dad : Va zad, pe hobr a roim-ni dezañ, ha petra a hellfe beza dellezeg evid e vadoberiou ?

3. Va haset ha va degaset en-deus e yehed ; bet eo e-unan o klask arhant Gabelus ; va lakaet en-deus da gaoud va gwreg ; an diaoul en-deus pellaet diuti, ha laouennaet he zud gantañ ; miret en-deus ouzin na ven lonket gand ar pesk ; da lakaet en-deus da-unan da weloud goulou an neñv ; ha gantañ eo om bet leuniet a beb mad. Petra eta a hellom-ni da rei dezañ hag a ve dellezeg euz a gement-se ?

²⁰⁵ ma : hag eñ

4. Hogen da bedi a ran, va zad, da houlen stard digantañ ma teurvezo kemeroud evitañ an hanter euz a gement on-eus degaset ganeom.

5. Neuze an tad hag ar mab o veza e halvet, a gasas anezañ a-du ; hag e pedjont stard anezañ ma teurvezje kemeroud evitañ an hanter euz a gement o-doa degaset ganto.

6. Neuze an Êl a lavaras dezo e kuzul : Bennigit Doue an neñv, ha meulit eñ dirag an oll re veo, o veza ma en-deus greet trugarez en ho keñver.

7. Rag mad eo derhel en amhoulou lavar-kuzet eur roue ; hogen enoruz eo diskoueza hag embanna oberiou Doue.

8. Gwelloh eo ar bedenn gand ar yun hag an aluzenn, eged an teñzoriou hag an aour a hellfed da zastumi.

9. Rag an aluzenn a zieub euz ar maro, hag hi eo a lam ar pehejou, hag a laka da gavoud an drugarez hag ar vuhez peurbaduz.

10. Hogen ar re a ra ar pehed hag ar fallagriez a zo enebourien o eneo.

11. Disklêria a rin eta deoh ar wirionez, ha ne guzin ket ouzoh eun dra a zo disgwel.

12. Pa bedez gand daelou, ha pa veziez ar re varo, ha pa lezez evid-se da lein, ha pa guzez ar re varo en da di a-hed an deiz, evid o bezia a-hed an noz ; me em-eus benniget da bedennou d'an Aotrou.

13. Hag o veza ma oas hetuz da Zoue, eo bet red e vijes arnodet gand an tempterez.

14. Ha bremañ an Aotrou en-deus va degaset evid da barea, hag evid dieubi diouz an diaoul Sara, gwreg da vab.

15. Rag em eo an Êl Rafael, unan euz ar seiz pere a zo dirag an Aotrou.

16. Pa glevjont kement-se e oent saouzanet, hag en eur grena en em daoljont d'an douar war o genou.

17. Hag an Êl a lavaras dezo : Ar peoh ra vezo ganeoh, n'ho-pezet ket a aon.

18. Rag pa edon ganeoh, dre youl Doue edo ; bennigit eñ, ha kanit e veuleudiou.

19. Diouz an doare e tebren hag eh even ganeoh ; hogen me a zo maget gand eur boued ha gand eur braoued ha na hellont ket beza gwelet gand an dud.

20. Pred eo din distrei etrezeg an hini en-deus va degaset : hogen c'hwi, bennigit Doue hag embannit e oll vuzudou.

21. Ha p'en-doe lavaret kement-se, e steuzias a-zirazo, ha ne helljont mui e weloud.

22. Neuze o veza en em daolet d'an douar war o genou a-hed teir eur, e vennigjont Doue ; hag o veza savet, eh embannjont e oll vuzudou.

XIII. Pennad.

Kanaouenn Tobias.

1. Neuze Tobias, an hini koz, o tigeri e henou, a vennigas an Aotrou, hag a lavaras : Braz out, Aotrou, er beurbadelez, ha da ren en em astenn en oll gantvedou ;

2. Rag te a skourjez hag a zieub : te a gas d'an ivernou, hag a zegas ahano : ha n'eus hini hag a hellfe tehoud diouz da zorn.

3. Anzavit an Aotrou, bugale Izrael ; ha meulit eñ dirag ar broadou :

4. Rag evid-se en-deus ho skignet e-touez ar broadou, pere na anavezont ket anezañ, evid ma embannot e vurzudou, ha ma root da anaoud dezo penaoz n'eus Doue all ollhalloudeg nemetañ.

5. Eñ eo en-deus or hastizet en abeg d'or fallagriezou, hag eñ eo a zieubo ahanom en abeg d'e drugarez.

6. Sellit eta petra en-deus greet en or heñver, hag anzavit anezañ gand douj ha gand kren ; ha meulit dreist penn en hoh oberiou Roue ar hantvedou.

7. Evidon-me eh anzavo anezañ e douar va sklaverez ; o veza ma en-deus diskouezet e veurdez e-keñver eur vroad, hag hi peherez.

8. Distroit eta, peherien ha grit reiz dirag Doue, ha kredit penaoz e ray trugarez en ho keñver.

9. Evidon-me ha va ene, en em laouennaim ennañ.

10. Bennigit an Aotrou, c'hwi oll e dud dilennet ; bezet deoh deizizou a levenez, hag anzavit eñ.

11. Jeruzalem, kêr Doue, da gastizet en-deus an Aotrou en abeg da oberiou da zaouarn.

12. Anzav an Aotrou en da vadou, ha bennig Doue ar hantvedou, evid ma adsavo e dabernakl ennout, ha ma lakay an oll sklaved da zistrei etrezeg ennout, ha ma en em laouennay e oll gantvedou ar hantvedou.

13. Euz a eur goulou skeduz e luhi ; hag ar poblou euz a oll harzou an douar a azeulo ahanout.

14. Ar broadou a zeuy a-bell-braz etrezeg ennout ; hag o tegas roou, eh azeulint ennout an Aotrou, hag e sellint da zouar evel eun douar santel.

15. Rag an ano braz a bedint ennout.

16. Ar re az tisprizo a vezo milliget ; ar re a zrougprezego diwar da benn a vezo barnet ; hag ar re a zavo ahanout a vezo benniget.

17. Evidout, te en em laouennay en da vibien, o veza ma vezint oll benniget, ha ma vezint strollet war-dro d'an Aotrou.

18. Gwenvidig eo ar re oll a gar ahanout, hag en em laouenna en da beoh.

19. O va ene, bennig an Aotrou, o veza ma en-deus dieubet Jeruzalem, e gêr, euz heh oll enkrezhou, eñ pehini eo an Aotrou, on Doue.

20. Gwenvidig e vezin, mar chom c'hoaz eur re bennag euz va gouenn evid gweloud sked Jeuzalem.

21. Perzier Jeruzalem a vezo greet gand safer ha smragduz²⁰⁶ ; hag he muriou tro-war-dro a vezo greet gand mein talvouduz-braz.

22. He leuriou-kêr a vezo paveet gand mein gwenn-kann ; hag a-hed he ruiou e vezo kanet alleluia.

23. Benniget ra vezo an Aotrou, pehini en-deus he savet ken uhel, ha renet warnezi e-pad kantvedou ar hantvedou. Amen.

XIV. Pennad.

Geriou diweza Tobias. Maro e vab.

1. Setu geriou diweza Tobias . Ha goude ma oe distroet ar gweled dezañ, e vevas daou vloaz ha daou-ugent ; hag eñ a welas mibien e nized.

²⁰⁶ safer ha smragduz : ?

2. Ha goude ma oe maro²⁰⁷ da zaou vloaz ha kant, e eo beziet gand enor e Niniv.
3. C’hweh vloaz hag hanter-kant en-doa pa gollas ar gweled, ha da dri-ugent e oe adroet dezañ.
4. An dilerh euz e vuhez a dremenas el levenez,, ha goude beza kerzet e douj Doue, e varvas e peoh.
5. Pa oe dare da vervel, e halvas Tobias e vab, ha seiz mab-bihan hemañ, pere a oa nized²⁰⁸ dezañ, hag e lavaras dezo :
6. Diskar Niniv a zo tost ; rag ne gouezo ket ger an Aotrou ; hag or breudeur pere a zo bet skignet euz a vro Izrael, a zistroy enni.
7. Oll zouar Izrael goude beza bet didud, a vezo poblet a-nevez, ha ti Doue pehini a zo bet devet, a vezo savet a-nevez : ha kement hini a zouj Doue a zistroy di.
8. Ar broadou a zilezo o idolou, a zeuy da Jeruzalem, hag a chomo eno.
9. Hag oll roueed an douar en em laouennay enni, oh azeuli Doue Izrael.
10. Selaouit eta ho tad, va mibien : servijit an Aotrou er wirionez, ha lakiit ho penn da ober ar pezh a zo hetuz dezañ.
11. Gourhemennit d’ho mibien ma raint oberiou reiz hag aluzennou, m’o-devezo koun euz a Zoue, ha ma vennigit anezañ e peb amzer er wirionez, hag euz o oll nerz.
12. Bremañ eta selaouit ahanon, va mibien, ha na chomit ket amañ ; hogen kerkent ha m’ho-pezo beziet ho mamm em heñver hag en heveleb bez, hastit mond kuit ahann :
13. Rag gweloud a ran penaoz fallagriez ar gêr-mañ he lakay da veza dismantret.
14. Pa oe eta maro e vamm, Tobias a yeas kuit euz a Niniv gand e wreg, hag e vibien, ha mibien e vibien, hag a zistroas etrezeg e dud-kaer.
15. Yah o havas en eur gozni vad ; o frederia a reas hag e serras o daoulagad dezo : oll zegouez ti Raguel a zastumas ; hag eñ a welas mibien e vibien beteg ar pempved rumm.
16. Ha goude m’en-doe bevet naonteg vloaz ha pevar-ugent e douj Doue, e varvas, hag e vibien a vezias anezañ gand lid braz.
17. E oll gerent, hag e oll vibien eo en em gendalhas bepred en eur vuhez vad, hag en eur vuhezegez santel, en heveleb doare ma oent karet gand Doue ha gand an dud ha gand kement hini a oa war an douar.

LEVR JUDITH

IV. Pennad

Arfaksad trehet gand Nabukodonozor

²⁰⁷ maro : marvet.

²⁰⁸ nized : ? Bugale-vihan.

V. Arfaksad, roue ar Vedied, goude beza lakaet kalz a boblou a blega dindan e veli, a zavas eur gêr greñv-braz, a anvas Ekbatanis,

VI. Gand mein-ben ha pevar-horneg. He muriou a reas euz a zeg ilinad ha tri-ugent a led, hag euz a dregont ilinad a uhelled ; ha touriou pere o-doa kant ilinad a uhelled.

VII. Pevar-horneg e oa an touriou, ha pep tu anezo en-doa ugent troatad a led, hag ar perzier a reas ken uhel hag an touriou.

VIII. Hag eñ a fougee gand nerz e arme, ha gand galloud e girri.

IX. Hogen en daouzegved bloaz euz e ren, Nabukodonozor, roue an Asiried, pehini a rene e Niniv, ar gêr vraz, a vrezelias ouz Arfaksad, hag a drehas anezañ,

X. Er gompezenn vraz, a zo anvet Ragan, war harz an Euftrat, hag an Tigris, hag ar Jadason, e kompezenn Erioc'h, roue an Elisied.

XI. Neuze e kreskas ren Nabukodonozor, hag e galon a zavas, hag eñ a gasas etrezeg ar re oll a chome er Silisia, e Damas, ha war al Liban,

XII. Hag etrezeg ar boblou a zo er Harmel, hag e Sedar, hag ar re a chom er Galilea, hag e kompezenn vraz Esdreton,

XIII. Hag etrezeg ar re oll a oa e Samaria hag en tu all da ster Jourdan beteg Jeruzalem, ha da oll vro Jese beteg ma teuer da harzou an Etiopia.

XIV. D'ar re-ze oll Nabukodonozor, roue an Asiried, a gasas kannaded ;

XV. Hogen ar re-mañ a youl pep hini a zinahas e houlenn, a gasas kuit e gannaded hep tra ebed, ha ne ziskouezas dezo nemed dismegañs.

XVI. Neuze ar roue Nabukodonozor o sevel droug ennañ ouz an oll boblou-ze, a douas dre e dron ha dre e rouantelez, penaoz eh enebje ouz an oll vroadou-ze.

II. Pennad.

Nabukodonozor a gas Holofern gand eun arme greñv.

1. En trizegved bloaz euz a ren Nabukodonozor, en eil deiz warn-ugent euz ar miz kenta, e oe dalhet kuzul e ti Nabukodonozor, evid en em aoza d'ar brezel.

2. Hag eñ a halvas an henaoured, hag e zaged, hag e vrezelidi, hag a roas da anaoud dezo e youl ar guzeta.

3. Lavaroud a reas dezo penaoz en-doa c'hoant da lakaad da blega dindan e veli an douar oll.

4. Kement-se o veza bet kavet mad gand an oll, ar roue Nabukodonozor a halvas Holofern, priñs euz e arme,

5. Hag a lavaras dezañ : Kee da stourmi ouz an oll rouanteleziou euz ar huz-heol, ha dreist-oll ouz ar re o-deus disprizet va beli.

6. Da lagad ne esperno rouantelez ebed, hag e likii da blega din an oll gêriou kreñv.

7. Neuze Holofern a halvas an duced hag an ofiserien euz a arme an Asiried, hag evid mond d'ar stourm, evel m'en-doa ar roue e hourhemennet dezañ, e tilennas c'hweh-ugent mil den war droad ; ha daouzeg mil gwareger war varh.

8. Lakaad a reas da gerzoud en o raog e oll droñsadou²⁰⁹ gand eun niver ar brasa a gañvaled, gand kement a oa red evid bevidigez an arme, gand tropellou ejenned ha deñved diniver.

9. Lakaad a reas da zastumi ed en oll Ziria, evid e gavoud pa dremenje.

10. Kemeroud a reas ivez kalz a aour hag a arhant euz a di ar roue.

11. Hag eñ en em lakaas en hent gand e oll arme, gand e girri, gand e varheien, hag e waregerien, pere a holoe gorre an douar, evel killeien-raden.

12. Ha goude m'en-doe tremenet harzou an Asiried, e teuas da veneziou braz Ange, pere a zo a-gleiz d'ar Silisia, hag e pignas en o oll gistilli²¹⁰, hag e kemeras o oll gêriou-kreñv.

13. Dre stourm e kemeras ar gêr vrudet euz a Veloti ; preiza a reas oll vibien Tarsis, ha mibien Izmael, pere a oa e penn an distro, hag ouz ar hreisteiz euz a zouar Sellon :

14. Treuzi a reas an Euftrat, hag e teuas e Mezopotamia ; dre stourm e kemeras an oll gêriou uhel a oa eno, adaleg froud Mambre beteg ar mor.

15. Kemeroud a reas ar vro, adaleg ar Silisia, beteg harzou Jafet, a zo ouz ar hreisteiz.

16. Oll vibien Madian a gasas gantañ, o oll vadou a breizas, hag e lazas gand ar hleze ar re oll a enebe outañ.

17. Goude-ze e tiskennas e parkou Damas e pred ar mederez, hag e lakaas an atn en oll edou, hag e lakaas da droha an oll wez hag an oll winiennou.

18. Hag ar spont anezañ a gouezas war an oll vibien euz an douar.

III. Pennad.

Rogentez Holofern.

1. Neuze ar roueed hag ar briñsed euz an oll gêriou hag euz an oll broviñsou euz a Siria, euz ar Mezopotamia, euz al Libia, hag euz ar Silisia a gasas kannaded etrezeg Holofern, pere a lavaras dezañ :

2. Ehanet da zroug ouzom : rag gwell eo deom beva o servija Nabukodonozor, ar roue braz, ha plega didannaout, eged mervel en eun doare reuzeudig, pe beza taolet er sklaverez.

3. On oll gêriou, hag on oll zouarou, on oll veneziou, hag or hrehiennou, hag or parkou, hag on tropellou ejenned, ha deñved, ha gevr, hag or hezeg, hag or hañvaled, hag on oll vadou, hag on tadou, a zo dirazout.

4. Bezet kement on-eus dindan da veli.

5. Ni hag or mibien a vezo da zervijerien dit.

6. Deus da aotrou peohuz deom, ha gra euz or servij evel ma kiri.

7. Neuze e tiskennas euz ar meneziou gand e varheien hag e arme vraz ; hag eñ a lakaas dindan e veli an oll gêriou hag an oll dud euz ar vro.

8. Hag euz an oll gêriou e kemeras da skoazell an dud kaloneka, hag ar re wella evid ar brezel.

9. Ha ker braz e oe ar spont er proviñsou-ze, ma teuas d'e ziambrouga priñsed hag henaoured ar vro gand ar poblou²¹¹,

²⁰⁹ e oll droñsadou : ?

²¹⁰ gistilli : gestell.

10. Pere a zegemere anezañ gand kurunennou, ha gand kleuzeuriou, o tañsa²¹² gand taboulinou ha gand c'hwitellou.

11. Ha petra bennag ma reent kement-se, ne helljont ket habaskaad fervder e galon :

12. Rag diskara a reas o hêriou, hag o hoajou-sakr a drohas.

13. Rag ar roue Nabudokonozor en-doa gourhemennet dezañ kas da get oll zoueed an douar, evid na vije galvet Doue neemetañ gand an oll vroadou en-doa gellet Holofern lakaad da bleaga dindan e veli.

14. Neuze e treuzas ar Siria Sobal, hag an Apamea oll, hag ar Mezopotamia oll, hag e teuas en Idumea, e douar Gabaa ;

15. Hag eñ a gemeras o hêriou, hag a chomas eno a-hed tregont devez, e-pad pere e hourhemennas e vije strollet e oll arme.

IV. Pennad.

Eliakim ar beleg-braz a ali d'ar bobl da houlen skozell digand an Aotrou.

1. Neuze bugale Izrael pere a chome e douar Juda, o-doe aon na gouezjent dindan galloud Holofern.

2. Ar spont hag an euz a grogas enno, gand aon na raje e-keñver Jeruzalem ha templ an Aotrou, evel m'en-doa greet e-keñver ar hêriou all hag o zemplou.

3. Hag i a gasas tro-war-dro da Zamaria beteg Jeriko : hag e kemerjont oll leinou ar menezioù.

4. Muriou a zavjont war-dro d'o bourhiou, hag e tastumjont ed evid en em aoza d'ar brezel.

5. Ar beleg Eliakim a skrivas ivez d'ar re oll a chome etrezeg Esdrelon, a zo rag-eneb d'ar gompezenn vraz a zo war harz Dotain, ha d'ar re oll a helle en em gavoud war an hent.

6. Evid ma kemerjont leinou ar menezioù dre bere e helled mond da Jeruzalem, hag evid ma tiwalljont eno al lehiou striz en em gave er menezioù.

7. Ha bugale Izrael a reas ar pezh a oa bet gourhemennet dezo gand ar beleg Eliakim.

8. Hag an oll bobl a harmas gand striv etrezeg an Aotrou ; hag i a uvuelas²¹³ o eneou gand ar yuniou hag ar pedennou, i hag o gwrazez.

9. Ar veleien en em holoas gand saeou-reun, ha bugale a oe lakaet war o dremm dirag templ an Aotrou ; hag aoter an Aotrou a holjont gand eur zae-reun.

10. Hag i a harmas a-unan etrezeg Doue Izrael, evid na vije ket roet o bugale e preiz, hag o gwrazez e rann, hag o hêriou e dismantr, hag o zantuar e saotr ; ha na zeujent ket o-unan e dismegañs e-touez ar broadou.

11. Neuze Eliakim, beleg-braz an Aotrou, a yeas war-dro da Izrael, hag a gomzas ouz ar bobl,

12. O lavaroud : Gouezit penaoz an Aotrou a zelaouo ouz ho pedennou, mar kendalhit er yuniou hag er pedennou dirag an Aotrou.

²¹¹ ar poblou : tud ar poblou.

²¹² o tañsa : o tañsal.

²¹³ a uvuelas ? Vi-koukoug ? a uhellaas (?) a uvellaas (?)

13. Ho-pezet koun euz a Voizez, servijer an Aotrou, pehini a oe treh da Amalek, war e nerz ha war e halloud, war e arme, war e dirennou, ha war e girri, ha war e varheien ; a oe treh dezañ, nann o stourmi gand an houarn, hogen gand ar zantelez euz e bedennou.

14. Evel-se e c'hoarvezo gand oll enebourien Izrael, mar kendalhit er pez hoh-eus deraouet da ober.

15. Ar bobl eta o klevoud an ali-ze, a bede an Aotrou, hag a chome bepred dirazañ.

16. Hag ar re zoken pere a ree sakrifisou-losk d'an Aotrou, o hinnige, hag i gwisket gand saeou-reun, hag o fenn goloet gand ludu.

17. Hag oll e pedent Doue a-greiz o halon, ma teuje da vizita e bobl a Izrael.

V. Pennad.

Bugale Izrael a fell dezo enebi ouz Holofern.

1. Roet e oe da anaoud da Holofern, priñs arme an Asiried, penaoz bugale Izrael en em aoze evid enebi, ha penaoz o-doa serret heñchou ar menezioù :

2. Hag o veza savet ennañ eun droug hag eur froudenn ar brasa, e halvas oll briñsed Moab, ha duged Ammon,

3. Hag e lavaras dezo : Livirit din piou eo ar bobl-se pehini a zalh ar menezioù ; pere eo o hêriou, petra eo an nerz hag an niver anezo : petra eo ar galloud hag an niver euz ar bobl-se, ha piou eo ar priñs euz o arme :

4. Ha perag e-touez ar re oll a chom er sav-heol, n'eus nemeto a gement o-deus disprizet ahanom, ha n'int ket deuet d'on diambrouga, evid on degemeroud e peoh ?

5. Neuze Akior, dug oll vibien Ammon, a respontas hag a lavaras : Mar prizez va zelaoui, o ! va aotrou, e livirin ar wirionez dirazout diwar-benn ar bobl-se a chom er menezioù, ha ger gaou ebed na zeuy er-mêz euz va genou.

6. Euz a ouenn ar Galdeed eo ar bobl-se.

7. Da genta e chomas e Mezopotamia, o vezea ne fellas ket dezo heulia doueed o zadou, a oa e bro ar Galdeed.

8. O veza eta dilezet ganto lidou o zadou, pere a azeule kalz doueed,

9. E keheljont eun Doue hepken, Doue an neñv pehini a hourhemennas dezo ma'z ajent er-mêz euz ar vro-ze, ha ma'z ajent da chom e Karan, ha pa zeuas an naonegez da holei an oll vro-ze, e tiskennjont d'an Ejipt ; hag eno e kreskjont kement e niver a-hed pevar-hant vloaz, na helled ket da niveri o arme.

10. Hag evel ma oant heskinet gand roue an Ejipt, pehini o rede da ober labouriou pri ha brikennou evid sevel e gêriou, e harmjont etrezeg o Doue, pehini a skoas war an Ejipt gand meur a houli.

11. Ha goude m'o-doe an Ejiptianed o haset kuit diouto, eh ehanas ar gouliou warnezo ; hogen pa fellas dezo o faka, hag o lakaad a-nevez e sklaverez dindanno,

12. Doue an neñv a zigoras dezo ar mor pa dehent, en heveleb doare ma en em stardas an doureier en daou du evel muriou ; hag i a dreuzas goueled ar mor, heb glebia o zreid.

13. Ha pa'z eas war o lerh en heveleb leh an arme diniver euz an Ejiptianed, e oe goloet gand an doureier ; ha ne chomas hini anezo, evid rei da anaoud an dra-ze d'ar re o goude.

14. Goude ma oe deuet ar re all er-mêz euz ar mor Ruz, ez ejont e distroiou menez Sina, e pere ne oa eet, ha ne oa chomet c'hoaz, den ebed.

15. Eno ar feunteuniou a oa c'hwero a zeuas da veza c'hwek evito, evid ma helljent eva anezo ; hag a-hed daou-ugent vloaz e teuas dezo o boued euz an neñv.

16. E pe leh bennag ma'z ejont, heb gwareg na saeziou, hep tirenn hag hep kleze, o Doue a stourmas evito, hag a drehas.

17. Ha n'en-deus den fêzet ar bobl-se, nemed pa eo pellaet euz a gehelidigez an Aotrou, e Zoue.

18. Hogen ken aliez gwech m'o-deus kehelet eun doue all ha ne oa ket o Doue, int bet roet d'ar preiz, d'ar hleze, d'ar vezegez.

19. Hogen ken aliez gwech ma o-deus bet keuz da veza dilezet kehelidigez o Doue, Doue an neñv en-deus roet dezo an nerz da enebi.

20. Evel-se eo o-deus trehet roueed ar Ganadeed, ar Jebuseed, ar Fereseed, an Heteed, an Heveed, an Amorreed, hag ar re halloudusa euz a Hesebon, hag o-deus bet e-kerz o oll gêriou.

21. Ha keit ha ma n'o-deus ket pehet a-eneb o Doue, eo bet ervad pep tra ganto : rag o Doue a gasa ar fallagriez.

22. Dre ze n'eus ket pell amzer, goude ma oant pellaet diouz an hent en-doa roet Doue dezo evid ma kerzjent ennañ, e oent dispennet er brezel gand kalz a boblou, ha kalz anezo a oe kaset e sklaverez en eun douar ha ne oa ket o hini.

23. Hogen a-nevez 'zo o veza distroet etrezeg an Aotrou, o Doue, int bet en em strollet goude ar skignadur-ze, int bet pignet war an oll veneziou-ze, hag e piaouont a-nevez Jeruzalem, e peleh ema o zempl.

24. Bremañ eta, va aotrou, enklask ma²¹⁴ o-deus greet eur gwall bennag a-eneb o Doue ; ha pignom etrezeg enno, rag o Doue a lakay anezo etre da zaouarn, hag e plegint dindan da veli.

25. Hogen ma n'he-deus ket pehet ar bobl-se a-eneb he Doue, ne hellim ket enebi outo²¹⁵ ; rag o Doue a ziwallo anezo, ha ni a vezo da vezegez dirag an douar oll.

26. Ha p'en-doe Akior ehanet da gomza, e savas droug e oll ofiserien Holofern, hag i a venne e laza, hag a lavare an eil d'egile :

27. Piou eo hennez a lavar penaoz bugale Izrael a hellfe enebi ouz ar roue Nabukodonozor, hag ouz e armeou, hag i tud dizarm ha dinerz, ha pere ne ouzont ket stourmi ?

28. Evid ma anavezo eta Akior penaoz e touell ahanom, pignom war ar menez-ze ; ha pa or-bezo kemeret ar re halloudusa anezo, neuze e lazim anezañ gand ar hleze kevred ganto :

29. Evid ma ouezo an oll boblou, Nabukodonozor eo doue an douar, ha n'eus hini all ebed nemetañ.

VI. Pennad.

Lakaet eo Akior etre daouarn bugale Izrael.

²¹⁴ ma : hag eñ

²¹⁵ outo : tud ar bobl-se.

1. Hogen p'o-doa ehanet ar re-mañ da gomza, Holofern e pehini e oa savet eun droug braz, a lavaras da Akior :

2. O veza ma eh-eus diouganet deom, o lavaroud penaoz ar bobl a Izrael a vezo diwallet gand he Doue, evid ma tiskouezin dit penaoz n'eus Doue ebed nemed Nabukodonozor :

3. Pa or-bezo o lazet oll evel eun den hepken, neuze e kouezi da-unan dindan kleze an Asiried, hag Izrael oll a vezo dispennet kevred ganeez :

4. Hag eh anavezi penaoz Nabukodonozor eo an aotrou euz an douar oll ; ha neuze kleze va brezelidi a dreuzo da gorr, ha goude ma vezi bet treuzet, e kouezi e-touez ar re hloazet euz a Izrael, ha ne vevi mui, hag e vezi lazet ganto.

5. Hogen ma venneze e ve gwir da ziougan, na vezet ket goeñvet da zremm ; ha na vezet mui drouglivet, ma venneze na hellfe ket beza sevenet ar peze a lavararn.

6. Hag evid ma anavezi penaoz e c'hoarvezo kement-se ganeez kevred ganto, setu e vezi unanet a-vremañ gand ar bobl-se, evid p'o lakay va hleze da houzañvi ar boan o-deus dellezet, ma vezi ivez skoet kevred ganto.

7. Neuze Holofern a hourhemennas d'e dud kemeroud Akior, e gas war harz Betulia hag e lakaad etre daouarn bugale Izrael.

8. Ha tud Holofern, o veza kemeret Akior, a yeas a-hed ar mêziou ; hogen pa dostajont ouz ar menezioù, batalmerien kêr a zeuas er-mêz en o eneb.

9. Hogen o tistrei war-gil ar menez, a stagjont Akior ouz eur wezenn dre e zaouarn ha dre e dreid ; hag o veza e ereet evel-se gand kerdin, hel lezjont eno, hag e tistrojont etrezeg o aotrou.

10. Koulskoude bugale Izrael o tiskenni euz a Vetulia, a zeuas d'al leh ma edo-eñ ; hag o veza e ziereet, e kasjont anezañ da Vetulia ; hag o veza e lakaet e-kreiz ar bobl, e houlennjont digantañ perag o-doa an Asiried e ereet hag e lezet eno.

11. En amzer-ze e oa da briñsed eno Ozias, mab Mic'ha, euz a vreurieze Simeon, ha C'harmi, a oa ivez anvet Gotoniel.

12. Akior eta e-kreiz an henaoured, ha dirag an oll bobl, a zanevellas ar peze en-doa lavaret da Holofern diouz e houlennou : penaoz pobl Holofern a oa bet fellet ganti e laza en abeg d'al lavar-ze ;

13. Ha penaoz Holofern e-unan o veza savet droug ennañ, en-doa gourhemennet evid se e lakaad etre daouarn an Izraelited ; evid, pa en-divije trehet an Izraelited, e lakaje ivez Akior da vervel gand kalz enkrezoù, dre m'en-doa lavaret : Doue an neñv a zo o tiwalloud anezo.

14. Goude m'en-doe Akior danevellet kement-se, an oll bobl en em daolas war he genou d'an douar oh azeuli an Aotrou ; hag oh unani o garmou hag o daelou, e kinnigjont kevred o fedennou d'an Aotrou,

15. O lavaroud : Aotrou, Doue an neñv hag an douar, sell ouz o rogoni, ha gwel or vuelled²¹⁶, ha evesa ouz dremm ar re eh-eus santellaet, ha diskouez penaoz ne zileze ket ar re a laka o fiziañs ennout, ha penaoz e vuelez ar re a laka o fiziañs enno o-unan, hag a ra fouge gand o nerz o-unan.

16. Goude an daelou-ze, ha goude m'en-doe ar bobl greet he fedenn a-hed an deiz, e tihlaharjont Akior.

17. O lavaroud : Doue on tadou, galloud pehini eh-eus disklêriet, a roy da hobr dit, en heveleb doare ma weli²¹⁷ an dispennadur anezo.

²¹⁶ vuelled : ? "uvelded" ?

²¹⁷ ma weli : pe "ma oueli" (?)

18. Ha pa en-devezo an Aotrou, on Doue, roet an dieub-se d'e zervijerien, ra vezo ivez da Zoue dit en or hreiz ; evid ma vevi ganeom, evel ma kiri, te ha da oll dud.

19. Neuze Ozias, pa oe peurzalhet ar huzul, a zegemeras anezañ en e di, hag a roas dezañ eur goan vraz.

20. Hag o veza galvet an oll henaoured, goude beza yunet 'hed an deiz, e kemerjont o fred kevred.

21. Goude-ze e oe galvet an oll bobl, hag e pedjont 'hed an noz el leh e pehini edont strollet, o houlenn skoazell digand Doue Izrael.

VII. Pennad.

Dienez vraz a zour e Betulia.

1. Hogen antronoz Holofern a hourhemennas d'e vrezelidi pigna a-eneb Betulia.

2. Bez' en-doa en e arme c'hweh-ugent mil den war droad, ha daou vil den warn-ugent war varh, heb niveri ar re a oa bet kemeret en ergerz, hag an oll dud yaouank a oa bet degaset euz ar proviñsou hag euz ar hêriou dre bere e oa tremenet.

3. En em aoza a rejont oll evid stourmi ouz bugale Izrael ; hag e teujont a-hed ar menez beteg ar gribell a zell ouz Dotain, adaleg al leh anvet Belma, beteg C'helmon a zo rag-eneb da Esdrelon.

4. Hogen bugale Izrael, pa weljont al lod braz a dud-se, en em daolas d'an douar war o genou, a holoas o fenn gand ludu, hag a bedas a-unan Doue Izrael, ma tiskouezje e drugarez e-keñver he fobl.

5. Hag o kemeroud o armou a vrezel, en em lakajont el lehiou, e pere ez oa heñchou keo evid treuzi ar menezioù, hag e tiwallent anezo noz-deiz.

6. Hogen Holofern oh ober an dro euz ar menez, a gavas penaoz ar feunteun a rede e kêr he-doa eur zan er-mêz euz a gêr war-zu ar hreisteiz : hag eñ a hourhemennas troha ar zan.

7. Bez' e oa koulskoude feunteunioù ha ne oant ket pell euz ar mouriou, e pere ez ee tud-kêr da glask dour e kuz, kent evid habaskaad o zehed eged e derri.

8. Hogen mibien Ammon ha mibien Moab a yeas da gavoud Holofern hag a lavaras dezañ : Bugale Izrael ne fiziont war o goafou na war o zaezioù ; hogen gand ar menezioù int diwallet, hag an torgennou hag an tornaodou a ra o nerz.

9. Evid ma helli o zrehi heb stourm, laka gwarded ouz ar feunteunioù, evid na gemerint ket a zour anezo, hag o lazi heb kleze ; pe e teuint da skuiza, hag e roint o hêr a gav dezo na hellfe ket beza kemeret, o veza ma eo savet war lein eur menez.

10. Ar gerioù-ze a oe kavet mad gand Holofern, ha gand e ofiserien, hag e oe lakaet kant den da ober gward war-dro da beb feunteun.

11. Pa oe bet greet ar gward-se a-hed ugent devez, an oll buñsou hag an oll naozioù dour en em gavas war seh, ha ne zeue ket e Betulia peadra da zizehidi a-hed eun devez ar re a chome enni, dre ma roed bemdez an dour d'ar bobl dre vent.

12. Neuze ar wazed, ar merhed, an dud yaouank, hag ar vugale, a zeuas oll da gavoud Ozias, hag a lavaras dezañ en eur vouez :

13. Ra vezo Doue da varner etre te ha ni ; rag te eo eh-eus dedennet an droug-se warnom, o veza n'eo ket fellet dit komza a beoh gand an Asiried ; ha dre ze eo en-deus Doue ol lakaet etre o daouarn.

14. Evel-se n'on-eus skoazell ebed, hag e kouezom dirag o daoulagad gand ar sehed, ha gand eur reuz braz.

15. Strollit eta bremañ ar re oll a zo e kêr, evid ma en em roim oll a-youl da bobl Holofern.

16. Rag gwell eo deom meuli an Aotrou er sklaverez ha ni beo, eged mervel bremañ, ha beza da vezegez d'an dud oll, pa welim or gwraegez hag or bugale o vervel dirag on daoulagad.

17. Ni ho ped hirio dirag an neñv hag an douar, ha dirag Doue on tadou, pehini or hastiz hervez or pehejou, ma lakeot bremañ kêr etre daouarn arme Holofern, ma kavim eur maro trumm dindan ar hleze, e-leh ar maro hir a zeu deom gand fo ar sehed.

18. Ha pa oe lavaret kement-se ganto, e savas garm ha daelou braz en oll strollad tud ; hag e-pad meur a eur²¹⁸ e harmjont a-unan ouz Doue, o lavaroud :

19. Gand on tadou on-eus pehet, a-eneb ar gwir on-eus embreget, fallagriez on-eus greet.

20. Te, o veza ma out mad, az-pezh truez ouzom : pe veñj or fallagriezou, o kastiza ahanom da-unan ; ha na laka ket ar re o-deus o fiziañs ennout, etre daouarn ar bobl ha na anavez ket ahanout.

21. Evid na vezo ket lavaret e-touez ar poblou : Peleh ema o Doue ?

22. Ha pa oent skuiz o harmi hag o ouela, e tavjont :

23. Neuze Ozias, beuzet gand an daelou, a lavaras dezo : Kalonekait mad, va breudeur, ha gortozom c'hoaz a-hed ar pemp devez-mañ trugarez an Aotrou :

24. Marteze eh habaskay e vuanegez, hag e savo gloar e ano.

25. Hogen ma ne zeu ket a skoazell deom, pa vezo tremenet ar pemp devez-se, e raim ar pezh hoh-eus lavaret.

VIII. Pennad.

Piou e oa Judit.

1. Ha kement-se a oe klevet gand Judit an intañvez, a oa merh da Verari, mab Idoks, mab Jozef, mab Ozias, mab Elai, mab Jamnor, mab Gedeon, mab Rafaim, mab Ac'hitob, mab Malc'hia, mab Enan, mab Natania, mab Salatiel, mab Simeon, mab Ruben ;

2. Heh ozah a oa anvet Manasez, pehini a varvas e pred mederez an heiz :

3. Rag pa lakae e dud da endramma ar parkeier, ar hrouez²¹⁹ a gouezas war e benn, hag eñ a varvas e Betulia e gêr, hag a oe beziet enni gand e dadou.

4. Tri bloaz hanter a oa aba ma oa chomet Judit intañvez.

5. Greet he-doa eviti er penn uhella euz he zi eur gambr disgwel, e pehini e chome kloz gand he flahed.

6. Hag hi gand eur gouriz-reun war he dargreiz, a yune e oll zeizioù he buhez, nemed e deizioù ar sabbat beb miz, hag e goueliou ti Izrael.

²¹⁸ a eur : meur a eurvez.

²¹⁹ ar hrouez : ? ar wrez (?)

7. Kaer-braz e oa hi ; hag heh ozah en-doa lezet ganti madou braz, kalz a zervijerien, ha degoueziou leun a dropellou a zaout hag a zeñved.

8. Brudet-braz e oa hi e-touez an oll, o veza ma touje kaer an Aotrou ; ha den ne lavare droug ebed diwar he fenn.

9. Pa glevas houmañ penaoz en-doa Ozias roet e her e roje kêr a-benn tri devez, e kasas da gerhoud an henaoured Chabri ha Charmi.

10. Ar re-mañ a zeuas d'he havoud, hag hi a lavaras dezo : Penaoz en-deus Ozias roet e her e lakaje kêr etre daouarn an Asiried, ma ne zeu skoazell deoh a-benn tri devez ?

11. Ha piou oh-hu-c'hwi, evid tempti an Aotrou ?

12. N'eo ket al lavar-ze a zedenno warnoh e drugarez : hogen kentoh e tegaso e vuaneged, hag e lakay da zevel e froudou.

13. Kemennet hoh-eus d'an Aotrou pred e drugarez hervez ho youl ; hag an deiz hoh-eus merket dezañ.

14. Hogen o veza m'eo habask an Aotrou, greom pinijenn evid kement-se, ha goulennom e drugarez e-kreiz on daelou.

15. Rag Doue ne hourdrouz ket evel eun den, ha ne zav ket a zroug ennañ evel e mab eun den.

16. Rag se vuelom²²⁰ on eneo dirazañ, ha gand eur spered a izelidigez, bezom da sklaved dezañ.

17. Ha pedom an Aotrou gand daelou, ma ray trugarez en or heñver evel ma karo : evid, evel ma eo bet strafuillet or halon gand rogoni on enebourien, ma fougeim ivez gand or vuelder²²¹.

18. Rag n'on-eus ket heuliet pehejou on tadou, pere o-deus dilezet o Doue, hag o-deus azeulet doueed a-ziavêz bro ;

19. Pere evid ar gwall-ze a zo bet roet da gleze, da wastadur, da vezegez o enebourien ; hogen ni, ne anavezom Doue all ebed nemetañ.

20. Gortozom eta gand vuelder e frealzidigez : hag eñ a enklasko or gwad e-kreiz glahariou on enebourien ; hag e vuelo an oll boblou a zao en on eneb ; hag an Aotrou, on Doue, o golooy a vez.

21. Ha bremañ, va breudeur, o veza ma oh henaoured pobl Doue, ha ma talh hoh ene diouzoh, savit o halon gand ho komziou, ma ouezint penaoz eo bet temptet on tadou, evid arnodi ma kehelent o Doue e gwirionez.

22. I a dle gouzoud penaoz on tad Abraham a zo bet temptet, ha penaoz goude ma oa bet arnodet gand kalz a hlarhariou, eo bet deuet da vignon da Zoue.

23. Evel-se Izaak, ha Jakob, ha Moizez, hag ar re oll o-deus plijet da Zoue, a zo bet tremenet dre halhariou braz, hag i tud feal.

24. Hogen ar re pere n'o-deus ket degemeret an arnodou-ze gand doujañs an Aotrou, pere o-deus diskouezet o dihabaskded, hag o-deus heget an Aotrou gand o rebechou hag o hrozou,

25. A zo bet dispennet gand an dispenser, hag a zo bet lazet gand an naered.

26. Rag se ne daeraom ket en abeg d'ar pezh a houzañvom ;

27. Hogen kredom penaoz ar hastizou-ze a zo disterroh eged or pehejou, ha penaoz ar walenn-ze a zegas Doue evel war e zervijerien, a zeu kentoh evid or gwellaenn, eged evid or holl.

28. Neuze Ozias hag an henaoured a lavaras dezi : Kement ha ma eh-eus lavaret a zo gwir, ha n'eus netra da damalloud en da heriou.

²²⁰ vuelom : uvellaom (?)

²²¹ vuelder : uvelder (?)

29. Ped eta bremañ evidom, o veza ma out eur vaouez santel hag a zouj Doue.

30. Ha Judit a lavaras dezo : Evel ma anavezit penaoz ar pezh em-eus lavaret a zo euz a Zoue ;

31. Arnodit ivez mar deu euz a Zoue ar pezh em-eus lakaet em penn da ober ; ha pedit eñ, evid ma startay va dezo.

32. Chom a reot henoz ouz porz kêr, ha me a yelo er-mêz gand va flah : pedit, evid, evel ma hoh-eus lavaret, ma sello an Aotrou a druez er pemp devez-mañ, ouz e bobl a Izrael.

33. Ne fell ket din e teufeh da enklaskoud ar pezh a fell din da ober ; ha ken na zistroin eterzeg ennoh, na rit netra nemed pedi an Aotrou, on Doue, evidon.

34. Hag Ozias, priñs Juda, a lavaras dezi : Kee e peoh, ha ra vezo an Aotrou ganez evid en em veñji euz on enebourien. Hag i, o veza he lezet eno, a yeas kuit.

IX. Pennad.

Pedenn Judit.

1. Pa oe eet ar re-mañ kuit, Judit a yeas en he fedenn-leh ; hag o veza gwisket eur zae-reun, e lakaas ludu war he fenn ; hag oh en em deurel d'an douar dirag an Aotrou, e harme outañ, o lavaroud :

2. Aotrou, Doue va zad Simeon, pehini eh-eus roet dezañ ar hleze evid en em ziwalloud diouz an diavêzidi, pere en o gwall-youl o-doa gwallet eur werhez, hag o-doa he goloet a vez :

3. Ha te pehini eh-eus lakaet o gwraez e preiz, hag o merhed e sklaverez ; hag eh-eus rannet o oll ziwisk etre da zervijerien, pere a zo bet leun a oaz evidout ; va skoazell me, intañvez me az-ped o ! Aotrou, va Doue.

4. Rag te eo eh-eus greet ar burzudou kenta, hag eh-eus o mennet an eil goude egile ; ha n'eh-eus greet nemed ar pezh a fell dit da ober.

5. Da oll heñchou a zo aozet, hag en da rag-gwel eh-eus lakaet da varnedigeziou.

6. Sell bremañ ouz kamp an Asiried, evel ma eh-eus sellet ouz kamp an Ejiptianed, pa redent, hag i armet, war-lerh da zervijerien, o fizioud war o hirri, ha war o marheien, ha war an niver braz euz o brezelidi.

7. Selloud a rejout hepken ouz o hamp, hag an deñvalijenn a holoas anezo.

8. Goueled ar mor a zalhas o zreid, hag an doureier a holoas anezo.

9. Ra hoarvezo kement-se, o ! Aotrou, gand ar re-mañ pere a laka o fiziañs en o niver braz, hag en o hirri, hag en o dardou, hag en o zirennou, hag en o zaeziou, hag en o goafiou,

10. Ha pere na ouzont ket penaoz eo te on Doue, pehini adaleg ar penn kenta eh-eus trehet an armeou, ha penaoz an Aotrou eo da ano.

11. Sav da vreh evel ma eh-eus greet adaleg ar penn kenta, ha torr o nerz gand da nerz ; ra ziskaro da vuaneged rogoni ar re pere a laka en o fenn gwalla da zantuar, ha saotra tabernakl da ano, ha diskara gand o hleze korn da aoter.

12. Gra, Aotrou, ma kouezo e rogoni dindan e gleze e-unan.

13. Ra vezo paket gand e zaoulagad e-unan, evel gand eul lindag, o selloud ouzin : ha sko warnezañ gand an dudi euz ar geriou a zeuy er-mêz euz va genou.

14. Laka kendalh em halon evid ma tisprizin anezañ, ha ro din nerz evid ma tiskarin anezañ.

15. Eun dra eo hag a vezo eñvaraz²²² evid da ano, pa vezo diskaret gand dorn eur vaouez.

16. Rag n'ema ket, o ! Aotrou, da nerz en niver braz, na da youl e nerz ar hezeg ; hag ar re rok adaleg ar penn kenta n'o-deus ket hetet dit ; hogen bepred eo bet kavet mad ganez pedenn ar re uvel hag ar re habask.

17. Doue an neñvou, krouer an doureier, hag Aotrou an oll grouadurien, selaou ouz va fedenn pegen dister bennag ma'z on, pa lakaan va fiziañs en da drugarez.

18. Az-pezh euz koun euz da gevredigez, ha laka ar geriou em genou, ha kreñva herder va halon, evid ma chomo da di en e zantelez ;

19. Ha ma anavezoz an oll boblou penaoz out Doue, ha n'eus hini all nemedout.

X. Pennad

Judit a ya er-mêz euz a Vetulia, hag a zo kaset da Holofern.

1. Hogen pa he-doe ehanet Judit da harmi ouz an Aotroun e savas euz al leh e pehini e oa en em daolet d'an douar dirag an Aotrou.

2. Hag hi o veza galvet he flah, a ziskennas d'he zi, a dennas he sae-reun, hag a guitas he dillad intañvez ;

3. Gwalhi a reas he horv ; en em larda a reas gand louzou c'hwez-vad ; rodella a reas he bleo ; eur hoof kaer a lakaas war he fenn ; hag e lakaas dillad he levenez : botou koant a lakaas en he zreid ; kemeroud a reas lagadennou breh, ha lili, ha lagadennou skouarn, ha bizeier ; ha gand heh oll ginklou en em ginklas.

4. An Aotrou e-unan a daolas warnezi eur sked braz, o veza ne zeue ket an oll ginklerez-se euz a wall-youl, hogen euz ar furnez. Evel-se an Aotrou a greskas he haerded, en heveleb doare ma oe kavet souezuz he hened gand an oll.

5. Rei a reas d'he flah da zougen eur podad gwin, hag eul lestrad eoul, ha bleud, ha fiez seh, ha bara, ha fourmaj ; hag hi a yeas kuit.

6. Ha pa oent deuet da borz kêr, e kavjont eno Ozias hag henaoured kêr, pere a hortoze anezi.

7. Pa welas ar re-mañ anezi, e oent souezet-braz gand he haerded dreist-ment.

8. Ne rejont koulskoude goulenn ebed outi, hag e lezjont anezi da vond e-biou, o lavaroud : Ra roy Doue on tadou e hras dit, ha ra greñvay gand e nerz oll vennoziou da galon, evid ma en em veulo Jeruzalem ennout, ha ma vezo da ano e-touez ar zent hag ar re wirion.

9. Hag ar re a oa eno a lavaras en eur vouez : Bezet greet, Bezet greet.

10. Hogen Judit en eur bedi an Aotrou, a yeas e-biou d'an noriou, hi hag he flah.

11. Hogen evel ma tiskenne euz ar menez war-dro goulou-deiz, gwarded an Asiried a gavas anezi, hag a grapas enni, o lavaroud : A behel e teuez-te, ha peleh ez ez-te ?

12. Hag hi a lavaras : Merh d'an Hebreed on ; tehet on diouto, o veza ma emeus anavezet penaoz e tleont beza roet e preiz deoh, dre ma o-deus ho tisprizet, ha n'eo ket fellet dezo en em rei deoh a galon vad, evid kaoud trugarez en ho keñver.

²²² eñvaraz : ?

13. Rag se em-eus mennet ennon va-unan, o lavaroud : Mond a rin da gavoud ar priñs Holofern, evid rei da anaoud dezañ ho sekredou ; hag e tiskouezin dezañ e pe zoare e hello ho kemeroud, hab ma kouezo hini ebed euz e arme.

14. Pa glevas ar re-mañ ar geriou-ze, e selljont ouz he dremm ; hag o daoulagad a oa saouzanet-braz, ker souezet e oant gand he haerded.

15. Hag e leverjont dezi : Miret eo da vuhez ganez, gand an dezo eh-eus kemeret da zond da gavoud or priñs.

16. Gouez eta penaoz pa en em ziskouezi dirazañ, e vezi degemeret mad gantañ, hag e vezi hetuz-braz dezañ He has a rejont eta da delt Holofern, hag e rojont da anaoud dezañ penaoz e oa hi eno.

17. Ha pa oa eet hi dirag Holofern, e oe raktal kemeret hemañ gand e zaoulagad.

18. Hag e ofiserien a lavaras dezañ : Piou a zispriz pobl an Hebreed, pere o-deus merhed ker kaer, ma tellezont e stourfem outo eviti ?

19. Pa welas Judit Holofern azezet dindan e delt pehini a oa brodet gand limestra, gand aour, ha smaragad²²³, ha mein all talvouduz-braz :

20. Ha pa welas-hi anezañ, en em daolas d'an douar, hag eh azeulas anezañ. Ha tud Holofern a zavas anezi dre hourhemenn o aotrou.

XI.Pennad.

Petra a lavar Judit da Holofern.

1. Neuze Holofern a lavaras dezi : En em galoneka, ha na zeuet ket ar spont ennout ; rag biskoaz n'em-eus greet a zroug da neb a fell dezañ servija ar roue Nabukodonozor.

2. Ma n'he-divije ket da bobl va disprizet, n'em-bije ket savet va goaf outi.

3. Hogen bremañ lavar din perag out pellaet diouto, hag eo bet kavet mad ganez dond etrezeg ennom ?

4. Ha Judit a lavaras dezañ : Kemer geriou da vatez ; rag ma heuliez geriou da vatez, an Aotrou a beurhray en da geñver ar pezh en-deus mennet da ober.

5. Rag Nabukodonozor, roue an douar a zo beo, ha beo eo e halloud a zo ennout evid kastiza ar re oll a zeu da fazia : rag n'eo ket an dud hepken a zeu d'e zervija drezout, hogen loened ar parkeier a zo ivez dindan e veli.

6. Furnez da spered a zo brudet e-touez an oll vroadou, hag anad eo d'an oll penaoz, n'eus nemedout a zo mad ha galloudeg en e rouantelez oll ; ha da reizded a zo brudet en oll vroioù.

7. N'eo ket kuzet ar pezh en-deus lavaret Akior ; ha gouzoud a reer ar pezh eh-eus gourhemennet diwar e benn.

8. Rag gwir eo penaoz on Doue a zo savet droug ennañ ouz e bobl en abeg d'o fehejou²²⁴, en heveleb doare m'en-deus lavaret dezi dre e brofeded, penaoz e lakaje anezi etre daouarn heh enebourien, en abeg d'he fehejou.

9. Hag o veza ma oar bugale Izrael penaoz o-deus pehet a-eneb o Doue, eo kroget enno ar spont razout.

²²³ smaragad : ?

²²⁴ d'o fehejou : pehejou tud ar bobl.

10. Ouspenn gand an naonegez int glaharet, ha gand an dienez a zour, e vened a-vremañ e vent tud varo.

11. An dezo zoken o-deus kemeret da laza o loened, evid eva o gwad.

12. Bez' o-deus gwiniz, gwin, hag eoul a zo gouestlet d'an Aotrou, o Doue, hag en-deus Doue difennet dezo na gemerjent anezo, e fell dezo o hemeroud, ha debri hag eva traou ha n'eo ket aotreet dezo lakaad o daouarn warnezo : pa reont eta kement-se, heb arvar eo e vezint kollet.

13. Pa em-eus anavezet kement-se, me da vatez, em-eus tehet diouto, hag an Aotrou en-deus va haset evid disklêria kement-se dit.

14. Rag me, da vatez, a azeul Doue, petra bennag ma on bremañ ganez : ha me a yelo er-mêz, ha me a bedo an Aotrou :

15. Hag eñ a lavaro din peur e tistaolo dezo o fehed ; ha me a zeuy, hag e roy da anaoud dit : hag e kasin ahanout e-kreiz Jeruzalem ; hag ez-pezo oll bobl Izrael evel deñved heb mesaer ; ha ne harzo ket zoken eur hi ouzit ;

16. Rag kement-se a zo bet disklêriet din gand rag-gwel Doue.

17. Hag o veza ma eo²²⁵ savet e Doue droug outo, on bet kaset evid e rei da anaoud dit.

18. An oll heriou-ze a blijas da Holofern, ha d'e dud ; souezet e oant euz a furnez Judit, hag e lavarent an eil d'egile :

19. N'eus maouez ebed war an douar heñvel ouz houmañ evid an doare, evid ar gaerded, hag evid furnez ar geriou.

20. Hag Holofern a lavaras dezi : Ervad en-deus greet Doue, pa en-deus da gaset e-raog da bobl, evid he lakaad etre on daouarn.

21. Hag o veza ma eo mad ar pezh a roez e ged, mar gra da Zoue kement-se em heñver, e vezo ivez da Zoue din ; ha te a vezo braz e ti Nabukodonozor, ha da ano a vezo brudet en douar oll.

XII. Pennad.

Judit a zebr hag a ev dirag Holofern.

1. Neuze e hourhemennas Holofern ma vije lakaet Judit el leh e pehini edo e deñzoriou, ha ma chomje eno, hag eñ a reizas ar pezh a vije roet dezi diwar e daol.

2. Ha Judit a lavaras dezañ : Ne hellan ket debri bremañ euz ar pezh eh-eus gourhemennet da rei din, gand aon na zeuje droug din : hogen euz ar pezh em-eus degaset ganen e tebrin.

3. Hag Holofern a lavaras dezi : Mar deuez da zioueri ar pezh eh-eus degaset ganez, petra a raim-ni evidout ?

4. Ha Judit a lavaras : Evel ma eo beo da ene, o ! va aotrou, da vatez n'he-devezo ket peurzebret kement-se, ken n'en-devezo greet Doue dre va dorn ar pezh em-eus lakaet em penn da ober. Ha servijerien Holofern a gasas anezi d'an telt, e pehini en-doa gourhemennet he has.

5. Hga hi a houlennas a-barz ma'z aje e-barz, ma vije aotreet dezi mond er-mêz pa vije noz hag a-barz an deiz, evid ober he fedenn d'an Aotrou.

6. Hag Holofern a hourhemennas d'e baotred a gambr d'he lezel hi da vond ha da zond, evel ma karje, a-hed tri devez, evid azeuli he Doue.

²²⁵ ma eo : ma'z eus

7. Mond a ree eta hi a-hed an noziou etrezeg traonienn Betulia, hag hi en em walhe en eur feunteun.

8. Hag o sevel ahano, e pede an Aotrou, Doue Izrael, ma reizje anezi an dezo he-doa kemeret evid dieubi he fobl.

9. Ha pa zistroe, e chome glan en he zelt, ha ne gemere he boued e-tro ar pardaez.

10. Hag ar pevare devez, Holofern a reas eur banvez da dud e di ; hag eñ a lavaras da Vagao, e spaz : Kee, hag ali d'an Hebreadez-se, ma aotreo anezi heh-unan dond d'am havoud.

11. Rag eur vez eo e-touez an Asiried, ma raje eur vaouez goap euz a eur gwaz, ha ma'z aje dioutañ, heb en em rei d'e youl.

12. Neuze Vagao a yeas da gavoud Judit, hag a lavaras dezi : Na defet ket a aon ar vaouez vad o vond da gavoud va aotrou, evid beza enoret dirazañ, evid debri hag eva gwin gantañ el levenez.

13. Ha Judit a lavaras dezañ : Piou on-me evid enebi ouz va aotrou ?

14. Me a ray kement ha ma kavod mad hag evid ar gwella : rag ar pezh a vezo hetuz dezañ, a vezo da eurvad din e oll zeiziou va buhez.

15. Hag hi a zavas, hag en em ginklas gand he dillad karer, hag o veza eet en e del, en em ziskouezas dirazañ.

16. Hogen kalon Holofern a oe skoet, rag eñ a oa leun a garantez eviti.

17. Hag eñ a lavaras dezi : Ev bremañ, ha debr el levenez, o veza ma eh-eus kavet trugarez dirazon.

18. Ha Judit a lavaras dezañ : Eva a rin, aotrou, rag enoret eo hirio va ene dreist kement enor en-deus bet 'hed va buhez.

19. Neuze e kemeras ar pezh a oa bet aozet gand he flah ; hag hi a zebras, hag a evas dirazañ.

20. Hag Holofern a oe kel laouen oh en em gavoud ganti, ma evas gwin, muioh eged n'en-doa evet biskoaz en e vuhez.

XIII. Pennad.

Judit a zistro da Vetulia, goude beza trohet e benn da Holofern.

1. Hogen pa oe deuet ar pardaez, e zervijerien a hastas en em denna pep hini en e di, ha Vagao a zerras doriou ar gambr, hag ez eas kuit.

2. Hogen oll e oant morgousket gand ar gwin :

3. Ha Judit a oa heh-unan en he hambr.

4. Holofern a oa kousket en e wele, moredet braz gand ar vezventi.

5. Ha Judit a lavaras d'he flah chom er-mêz dirag dor ar gambr, ha lakaad evez.

6. Ha Judit en em lakaas dirag ar gwele, o pedi gand daelou ; hag e fiñvas he muzellou didrouz,

7. E lavaras : Aotrou, Doue Izrael, kreñva ahanon, ha sell bremañ ouz ar pezh a ya da ober da dorn, evid, evel ma eh-eus e lavaret, ma adsavi da gêr a Jeruzalem : ha ma peurhrin ar pezh em-eus mennet a hellfen da ober drezout.

8. Ha pa he-doe lavaret kement-se, e tostaas ouz ar peul a oa e penn e wele, e tistagas e hourgleze a oa a-ispill outañ.

9. Ha goude ma he-doe e zihouinet, e krogas e bleo penn Holofern, hag e lavaras : Aotrou Doue, kreñva ahanon bremañ.

10. Hag hi a skoas diou wech war e houzoug, hag a drohas e benn ; hag o veza tennet eur gouel er-mêz euz ar peuliu, e tirodellas e gorv dibenn.

11. Ha nebeud goude ez eas er-mêz euz ar gambr, hag e roas penn Holofern d'he flah, hag e hourhemennas dezi m'he lakaje en he sah.

12. Hag i o-diou a yeas er-mêz, hervez ma oant boazet da ober, evel ma'z ajent da bedi ; hag i a dreuzas ar hamp, hag a reas an dro euz an draonienn, hag a zeuas ouz porz kêr.

13. Ha Judit a lavaras d'ar re a ziwalle muriou kêr : Digorit an doriou, rag ganeom ema Doue, pehini en-deus diskouezet e nerz en Izrael.

14. Ha pa glevas an dud-mañ anezi, e halvjont henaoured kêr.

15. Hag i oll a zeuas etrezeg enni, adaleg ar bihanna beteg ar brasa ; rag ne gredent mui e teuje-hi,

16. Hag o veza enaouet goulouennou, en em lakajont oll en-dro dezi ; hag i o pigna war eur grehienn, a hourhemennas ma vije tavet. Ha pa oe tavet an oll,

17. E lavaras Judit : Meulit an Aotrou, on Doue, pehini n'en-deus ket dilezet ar re a fizie ennañ ;

18. Pehini en-deus peurhreet drezon an drugarez en-doa touet da di Izrael, ha pehini en-deus lazet en noz-mañ gand va dorn enebour e bobl.

19. Hag o tenna penn Holofern euz ar zah, e tiskouezas anezañ dezo, o lavaroud : Setu penn Holofern, priñs arme an Asiried, ha setu ar ouel e pehini e oa gourvezet en e vezventi, e peleh en-deus an Aotrou, on Doue, skoet gantañ dre zorn eur vaouez.

20. Evel ma oa beo an Aotrou, e Êl en-deus va diwallet, ha pa on eet ahann, ha pa on chomet eno, ha pa on distroet amañ ; hag an Aotrou n'en-deus ket va lezet, me e vatez, da veza saotret ; ha va lakaet en-deus da zistrei etrezeg ennoh dinamm a behed, laouen euz e dreh, euz va zeh²²⁶, hag euz ho tieub.

21. Meulit eñ oll, o veza ma eo mad, o veza ma pad e drugarez beteg ar hantvedou.

22. Neuze i oll oh azeuli an Aotrou, a lavaras dezi : Da venniget en-deus an Aotrou gand e nerz, o kas da get drezout on enebourien.

23. Ozias, priñs pobl Izrael, a lavaras ivez dezi : Benniget out, va merh, gand an Aotrou, an Doue uhel-braz, dreist an oll wragez a zo war an douar,

24. Benniget ra vezo an Aotrou, krouer an neñv hag an douar, pehini en-deus da reizet evid troha e benn da briñs on enebourien.

25. Rag lakaet en-deus hirio da ano da veza ker brudet, ma vezo bepred da veuleudi e genou an dud, pere o-devezo koun da viken euz a nerz an Aotrou : o veza n'eh-eus ket espernet da vuhez, e-kreiz an anken hag ar glahar euz da bobl ; hogen ma eh-eus miret ouz he dismantr, dirag an Aotrou.

26. Hag an oll bobl a lavaras : Bezet greet, bezet greet.

27. Hogen Akior o veza bet galvet a zeuas, ha Judit a lavaras dezañ : Doue Izrael da behini eh-eus roet testeni penaoz e hell en em veñji euz e enebourien, en-deus trohet e-unan, en noz-mañ dre va dorn, penn priñs an oll re ziskredig.

28. Hag evid ma ouezi heb arvar penaoz eo gwir, setu amañ penn Holofern, pehini gand fae ha rogoni a reas goap euz a Zoue Izrael, hag a ziouganas dit da

²²⁶ va zeh : tehoud.

varo, o lavaroud : P'am-bezo trehet pobl Izrael, e likiin da dreuzi da gorr gand ar hleze.

29. Pa welas Akior penn Holofern e savas eur spont braz ennañ, en em daolas ouz treid Judit war e henou d'an douar, hag e fatas.

30. Hogen pa zistroas dezañ e-unan, en em daolas ouz treid Judit, hag eh azeulas anezi, o lavaroud :

31. Benniget out gand da Zoue e oll di Jakob, o veza ma vezo meulet ennout Doue Izrael, e-touez an oll boblou a glevo meneg euz da ano.

XIV. Pennad.

Penn Holofern a zo staget ouz mur kêr. Spont braz an Asiried.

1. Neuze Judit a lavaras d'an oll bobl : Va zelaouit, va breudeur ; stagit ar penn-ze war lein or muriou :

2. Ha kerkent ha ma vezo savet an heol, kemerit oll hoh armou, hag it er-mêz gand eun trouz braz, nann evid diskenni etrezeg an eneboutien, hogen pa fellfe deoh stourmi outo.

3. Neuze e vezo red d'ar warded tehoud evid dihuna o friñs, ma teuy d'ar stourm.

4. Ha pa vezo redet o duced etrezeg telt Holofern, ha pa gavint e gorr dibenn, hag eñ o neui en e wad, e vezint spontet-braz.

5. Ha pa o gwelot o tehoud, it gand fiziañs war o lerh, rag an Aotrou o lakay da veza mahet dindan ho treid.

6. Neuze Akior o weloud ar pez en-doa greet ollhalloud Doue e-keñver Izrael, a zilezas lidou ar baganed, hag en em roas da gredenn Zoue : troha a reas krohenn e bod-mezenn ; hag eñ a oe degemeret e breuriez pobl Izrael ; hag oll re e ouenn bete-vremañ.

7. Kerkent eta ma teuas an deiz, e stagjont ouz ar vur penn Holofern ; ha pep hini o veza kemeret e armou, ez ejont er-mêz oh ober trouz ha garmou braz.

8. Ar warded o weloud kement-se, a redas etrezeg telt Holofern.

9. Hogen ar re a oa en telt a zeuas, hag en em zalhas ouz dor ar gambr ; hag i a ree trouz evid e zihuna, ma vije kentoh divoredet gand an trouz braz-se, eged gand e dud.

10. Rag den ne grede na skei war an nor, na mond e kambr priñs an Asiried.

11. Hogen pa oe deuet an duced, ar vilinerien hag an ofiserien genta euz a arme an Asiried, e leverjont da zervijerien ar gambr :

12. It e-barz, ha dihunit eñ, rag ar razed-se o-deus bet an hesder²²⁷ da zond er-mêz euz o zoullou, ha da hervel ahanom d'an emgann.

13. Neuze Vagao o veza eet er gambr a chomas ouz gouel an nor, hag a stlakas gand e zaouarn ; rag eñ a venne penaoz e oa kousket gand Judit.

14. Hogen o veza ne gleve trouz ebed evel ma ra eun den kousket, e tostaas c'hoaz ouz ar ouel, e savas anezi ; ha pa welas korv maro Holofern gourvezet war an douar, hag eñ dibenn ha goloet gand e wad, en em lakaas da harmi gand daelou, hg e rogas e zillad.

²²⁷ hesder : ?

15. Mond a reas neuze da delc Judit, hag o veza na gavas ket anezi, e teuas er-mêz dirag ar bobl,

16. Hag e lavaras : Eun Hebreadez hepken he-deus lakaet ar reustl e ti ar roue Nabukodonozor ; rag setu Holofern a zo gourvezet war an douar, ha n'ema ket e benn outañ.

17. Pa glevas kement-se priñsed arme an Asiried, e rojont oll o dillad, hag i a grenas hag a oe spontet-braz ; hag eur reustl braz a grogas en o spered.

18. Hag eur garm direiz a zavas e-kreiz ar hamp.

XV. Pennad.

An Asiried a deh. Bugale Izrael a ya war o lerh.

1. Pa glevas oll arme an Asiried penaoz e oa bet dibennet Holofern, e kolljont o spered hag o skiant ; hag aliet gand o aon ha gand o spont hepken, ne glaskjont mui nemed an teh.

2. En heveleb doare ne gomze hini gand e amezeg ; hogen o soubla o fenn, hag o tilezel pep tra, e hastent da dehoud diouz an Hebreed, a glevant o tond war o lerh gand o armou ; hag i a dehe a-reuz d'ar parkou ha dre wenodennou an tuniou²²⁸.

3. Bugale Izrael eta oh o gweloud o tehoud a yeas war o lerh, hag a ziskennas o seni gand ar hornou-boud, hag o harmi war o lerh.

4. Hag evel-se n'ez ee ket an Asiried en eur stroll, e tehent heb reiz ; hogen bugale Izrael a yee en eur stroll, war o lerh ; hag i a zsipenne kement hini anezo a hellent da dizoud.

5. Hogen Ozias a gasas kannaded etrezeg ar oll gêriou hag an oll broviñsou euz a Izrael.

6. Evel-se pep proviñs ha pep kêr, o veza dilennet hag armet o zud yaouank, o hasas a-eneb an Asiried, pere a oe heskinet ganto, ken na oent kaset beteg harzou o bro.

7. Koulskoude ar re a oa chomet e Betulia, a yeas da gamp an Asiried ; hag i a gemeras ar preiz o-doa lezet an Asiried, hag a oe sammert-braz.

8. Hogen ar re a zistroas da Vetulia goude beza trehet an Asiried, a zegasas ganto kement ha ma oa bet dezo ; ha ne oe hini anezo, adaleg ar bihanna beteg ar brasa, na zeuas da veza pinvidig gand e breiz, ken e deñved, ken e saout, ken e oll binviou.

9. Hogen Joakim, ar Beleg-braz, a zeuas euz a Jeruzalem da Vetulia gand e oll henaoured, evid gweloud Judit.

10. Houmañ o veza eet er-mêz evid e ziambrouga, i oll a vennigas anezi en eur vouez, o lavaroud : Te a zo gloar Jeruzalem, te a zo levenez Izrael, te a zo enor or pobl.

11. Rag evel eur gwaz out en em renet, hag en em greñvaet eo da galon ; o veza ma eh-eus karet ar glanded, ha goude ma eh-eus dioueret da ozah, n'eh-eus ket kemeret eun ozah all ; dre-ze e dorn an Aotrou en-deus da greñvaet, hag e vezi benniget da viken.

12. Hag an oll bobl a lavaras : Bezet greet, bezet greet.

²²⁸ an tuniou : erinou (marteze amañ, an tevennou).

13. A-hed tregont devez, a-veh ma oe dastumet gand pobl Izrael oll ziwiskou an Asiried.

14. Roet e oe gand ar bobl da Judit kement a oe anavezet evid beza bet da Holofern, hag en aour, hag en arhant, hag e dillad, hag e mein talvouduz, hag en arrebeuri e peb doare.

15. Hag an oll wazed, hag ar merhed, hag ar plahed-yaouank hag ar baotred-yaouank en em laouennae, o seni gand an telennou hag al lirennou.

XVI. Pennad.

Kanaouenn Judit. He maro.

1. Neuze Judit a ganas eur ganaouenn d'an Aotrou, o lavaroud :

2. Kanit d'an Aotrou gand taboulinou, kanit d'an Aotrou gand simbalou ; kanit eur ganaouenn nevez dezañ, meulit ha pedit e ano.

3. An Aotrou eo a dorr ar brezeliou, an Aotrou eo e ano.

4. Lakaet en-deus e gamp e-kreiz e bobl, evid on tenna euz a zaouarn on oll enebourien.

5. Penn an Asiria a zo deuet euz ar meneziou, diwar-zu an hanternoz gand eun niver hag eun nerz vraz ; hag al lod braz anezo o-deus leuniet ar froudou, hag o hezeg o-deus goloet an traoniennou²²⁹.

6. Laavret en-doa e tevje va douarou, e lazje gand ar hleze va zud-yaouank , e roje e preiz va bugale vunud, hag e sklaverez va flahed-yaouank.

7. Hogen an Aotrou ollhalloudeg en-deus harzet outañ, hag en-deus lakaet da goueza e briñs etre daouarn eur vaouez, pehini he-deus e lazet.

8. Rag ar galloudeg²³⁰ anezo n'eo ket bet diskaret gand an dud-yaouank, n'eo ket bet skoet gand mibien Titan : n'eo ket langouined vraz-direiz o-deus enebet outañ ; hogen Judit, merh Merari, eo he-deus e ziskaret gand kaerded he dremm.

9. Tennet he-deus he dillad a intañvez, ha gwisket he-deus he dillad a levez evid dasorhi bugale Izrael.

10. Lakaet he-deus louzou c'hwez-vad war he dremm ; eur hoof kaer he-deus lakaet war he bleo ; eur zae nevez he-deus kemeret evid e douella.

11. He botou o-deus mezevellet e zaoulagad ; he haerded he-deus trehet e galon ; hag hi he-deus trohet e benn gand e gleze e-unan.

12. Ar Bersied a zo bet saouzanet gand he hendalh, hag ar Vedied gand he herrder.

13. Neuze kamp an Asiried en-deus yudet, pa o-deus gwelet on tud, hag i dare gand ar sehed.

14. Mibien ar gwragez yaouank o-deus skoet ganto ; hag i o-deus o lazet evel tud-yaouank war deh : lazet int bet en emgann dirag an Aotrou, va Doue :

15. Kanom eur ganaouenn d'an Aotrou, kanom eur ganaouenn nevez d'on Doue.

16. Aotrou Adonai, braz out, ha brudet-braz evid da nerz, ha ne hell den da drehi.

²²⁹ o hezeg o-deus goloet an traoniennou : ?

²³⁰ ar galloudeg : an hini galloudeg.

17. Ra zento ouzit da oll grouadurien ; rag komzet eh-eus, hag i a zo bet greet : da spered eh-eus kaset, hag i a zo bet krouet²³¹ ; ha ne hell den harza ouz da vouez.

18. Ar meneziou a vezo keflusket en o diazez gand an doureier ; ar vein a deuzo evel ar gêr dirazout.

19. Hogen ar re a zouj ahanout a vezo braz dirazout e pep tra.

20. Gwa d'ar vroad en em zispaho ouz va fobl, rag an Aotrou ollhalloudeg en em veñjo anezo ; hag eñ a zeuy d'o gweloud e deiz ar varn.

21. Lakaad a ray da zevel en o hig tan ha preñved ; evid ma tevint, ha ma vezint krignet da viken.

22. Goude an treh-se, an oll bobl a zeuas da Jeruzalem evid azeuli an Aotrou : ha goude m'o-doe en em hlannaet, e kinnigjont dezañ o oll zakrifisou-losk, hag o gouestlou, hag o leou.

23. Hogen Judit o veza kemeret oll armou Holofern a oa bet roet dezi gand ar bobl, hag ar ouel he-doa heh-unan tennet euz e wele, a ginnigas anezo d'an Aotrou evel eur houn a ankounah.

24. Laouen e oe ar bobl pa welas al lehiou santel ; ha levez an treh-se a oe lidet gand Judit a-hed tri miz.

25. Hogen goude-ze pep hini a zistroas d'e di ; ha Judit a oe brudet-braz e Betulia, ha prizet dreist-oll e oll vro Izrael.

26. Hag ar hlanded hag ar galoniez a oa kevred enni ; en heveleb doare ne anavezas gwaz ebed, keit ha ma vevas-hi, abaoe ma oa maro Manasez, heh ozah.

27. Hogen en deziou gouel, en em ziskoueze gand kalz a sked.

28. Chom a reas e ti heh ozah a-hed pemp bloaz ha kant ; ha goude beza lakaet e dieub he flah²³², e varvas, hag e oe beziet gand heh ozah e Betulia.

29. Ar bobl oll a ouelas anezi a-hed seiz devez.

30. Keit ha ma vevas, hag a-hed kalz bloaveziou all goude he maro, ne zeuas den da reustla Izrael.

31. Hogen deiz an treh-se a zo bet lakaet gand an Hebreed e reiz an deziou santel ; ha lidet eo gand ar Iuzevien abaoe neuze bete-vremañ.

²³¹ hag i a zo bet greet : da spered eh-eus kaset, hag i a zo bet krouet : ?

²³² e dieub he flah : ?

LEVR ESTER

XVII. Pennad

Banvez kaer Asuerus. Kas a ra kuit e wreg Vasti.

1. E deziou Asuerus, pehini en-deus renet adaleg an Indez betek an Etiopia war gant proviñs seiz warn-ugent

2.

3. Pa azezas war tron e rouantelez, Suza a oe ar penn-kêr euz e rouantelez.

XXVIII. En trede bloaz euz e ren, e reas eur banvez braz d'e oll briñsed ha d'e ofiserien, d'ar re galoneka euz ar Bersied, ha d'ar re genta euz ar Vedied, ha da renerien ar proviñsou a oa dirazañ ;

XIX. Evid diskoueza madou ha sked e rouantelez, ha meurded e halloud, e-pad pell amzer, da lavaroud eo, a-hed nao-ugent devez.

XX. Ha pa oe peurhreet ar banvez-se, ar roue a bedas an oll bobl en em gave e Suza, adaleg ar brasa betek ar bihanna : hag eñ a hourhemennas aoza eur banvez a-hed seiz devez e porz ar harz²³³, hag eur hoad a oa bet savet gand ar roueed gand eur meurded a roue.

XXI. Stegnet e oe a bep tu goueliou lin loan a liou perz hag a liou glaz, staget gand ereou seiz a liou-tane, pere a oa tremenet e lagadennou olifant, ha staget ouz peuliu marbr. Gweleou aour hag arhant a oa lakaet e reiz war al leur strink ha marbr, pehini a oa peñtet e meur a zoare kaer.

XXII. Ar re a oa bet pedet eno a eve e listri aour, hag ar boued a oa douget war pladou disheñvel an eil diouz egile. Rei a reed ivez gwin ar gwella, ha gand paoder, evel ma telleze da veurded ar roue.

XXIII. Den ne redie da eva ar re ne felle ket dezo eva ; hogen gourhemennet en-doa ar roue ma vije unan euz e briñsed ouz pep taol, evid ma kemerje pep hini ar pezh a garje.

XXIV. Ar rouanez Vasti a reas ivez eur banvez d'ar merhed er palez e pehini e chome peurvuia ar roue Asuerus.

XXV. Er seizved deiz, pa oa laouen ar roue, ha pa oa tomm d'e benn gand al lod gwin en-doa evet, e hourhemennas da Vauman, da Vazata, ha da Harbona, ha da Vagata, ha da Abgata, ha da Zetar, ha da Harhas, o-zeiz spazerien d'ar roue, hag a oa bepred dirazañ ;

XXVI. Ma tegasjent dirag ar roue ar rouanez Vasti, hag hi ar gurunenn war he fenn, evid ma tiskouezje he haerded d'e oll boblou ha d'e briñsed ; rag hi a oa kaer-meurbed.

XXVII. Hogen hi a zinahas mond, hag a zisprizas dond hervez ar gourhemenn en-doa greet ar roue dezi gand e spazerien. Asuerus eta a vuanekaas, hag eun droug braz o veza savet ennañ ;

²³³ ar harz : al liorz.

XXVIII. E houlennas kuzul digand ar re fur, pere diouz kiz ar roueed, a oa bepred tost dezañ, ha diouz lavar pere e ree pep tra, dre ma anavezent al lezennou, ha barnou ar re goz,

XXIX. (Hogen ar re genta hag ar re dosta anezo a oa Karsena, ha Setar, hag Admata, ha Tarsis, ha Marez, ha Marsana, ha Mamuc'han, seiz dug ar Bersied hag ar Vedied, pere a wele dremm ar roue, ha pere a azeze ar re genta war e lerh).

XXX. Da be boan e varnje ar rouanez Vasti, pehini ne oa ket fellet dezi senti ouz ar gourhemenn en-doa greet ar roue dezi gand e spazerien.

XXXI. Ha Manuc'han a lavaras dirag ar roue, ha dirag e briñsed : Ar rouanez Vasti n'he-deus ket gwallet ar roue hepken, hogen ivez an oll boblou, hag ar briñsed a zo e oll broviñsou ar roue Asureüs.

XXXII. Hag ar pez he-deus greet ar rouanez o veza gouezet gand an oll wragez, i a zisprizo o ezeh, o lavaroud : Ar roue Asureüs en-deus gourhemennet d'ar rouanez Vasti mond d'e gavoud, ha n'eo ket fellet dezi mond.

XXXIII. Ha diouz ar skwer-ze, gwrazez oll briñsed ar Bersied hag ar Vedied a zisprizo gourhemennou o ezeh ; evel-se droug ar roue a zo reiz.

XXXIV. Ma her havez mad²³⁴, ra vezo greet eur hemenn dre urz, ha ra vezo skrivet hervez lezenn ar Bersied hag ar Vedied, pehini ne heller ket da derri, penaoz ar rouanez Vasti n'ez ay mui da gavoud ar roue, hogen ma kemero eun all he hurunenn, hag hi gwelloc'h egeti.

XXXV. Ha ra vezo embannet ar hemenn-ze e oll broviñsou da rouantelez (a zo braz-meurbed), evid ma teuy an oll wragez, ken euz ar re vraz, ken euz ar re vihan, da enori o ozah.

XXXVI. Kuzul Mamuc'han a oe kavet mad gand ar roue ha gand e briñsed ; hag ar roue a reas diouz m'en-doa lavaret ;

XXXVII. Hag eñ a gasas liziri e oll broviñsou e rouantelez, hag i skrivet e meur a yez, ma hellje peb broad o hlevoud hag o lenna, evid m'o-defe an ezeh ar veli en o ziez ; ha ma vije embannet kement-se e-touez e oll boblou.

II. Pennad.

Ester a zo lakaet da rouanez.

1. Goude kement-se, pa oe habaskaet buanegez ar roue, e teuas koun dezañ euz a Vasti, hag euz ar pez he-doa greet, hag euz ar pez he-doa gouzañvet :

2. Hogen servijerien hag ofiserien ar roue a lavaras : Bezet klasket evid ar roue merhed gwerh ha kaer ;

3. Ha bezet kaset tud dre an oll broviñsou evid gweloud ar merhed kaer ha gwerh, hag o has da gêr Suza, hag o lakaad e ti ar merhed dindan dorn Egeüs ar spaz, pehini eo an diwaller hag ar mirer euz a wragez ar roue : hag eno e vezo peadra d'en em hlana ha kement tra all a vezo red dezo.

4. Hag an hini anezo oll a blijo ar muia d'ar roue, a zeuy da rouanez e-leh Vasti. Al lavar-ze a oe kavet mad gand ar roue, hag eñ a hourhemennas ma vije greet evel m'o-doa kuzuliet.

5. E kêr Suza e oa eur Iuzeo anvet Mardoche, mab Jair, mab Semei, mab Kis, euz a ouenn Jemini.

²³⁴ Ma her havez mad : ma kav mad ar roue.

6. Pehini a oa bet dezouget euz a Jeruzalem, en amzer m'en-doa Nabudokonozor, roue Babilon, dezouget Jekonias, roue Juda.

7. Maget en-doa Edisa, merh e vreur, a oa anvet ivez Ester : kollet he-doa-hi he zad hag he mamm ; koant ha kaer e oa. He zad hag he mamm o veza maro, Mardoche he hemeras da verh.

8. Pa oe eta embannet kemenn ar roue, ha pa oe kaset da Zusa kalz merhed kaer, a lakaed etre daouarn Egeüs ar spaz, Ester ivez e-touez ar re all a oe lakaet etre e zaouarn, evid beza diwallet gand ar merhed all.

9. Houmañ a blijas dezañ, hag a gavas trugarez dirazañ. Hag eñ a hourhemennas da eur spaz all ma hastje rei dezi peadra d'en em hlana, ha kement a dlee beza en he lod-hi, hag ivez seiz plah²³⁵ euz ar re gaerra euz a di ar roue, hag he hinkla hag he hempenni, hi hag he flahed.

10. Ne fellas ket da Ester lavaroud dezañ a be vro, nag a be bobl e oa-hi ; rag Marloche en-doa kemennet dezi ma tavje a-grenn war gement-se.

11. Eñ a valee bemdez dirag leur an ti e pehini e oa diwallet ar merhed dilennet, leun a breder e-keñver Ester, ha gand ar c'hoant en-doa da houzoud petra a hoarvezje ganti.

12. Hogen pa oe deuet an amzer da bep hini euz ar plahed-yaouank da vond da gaodu ar roue pep hini d'he reiz, goude beza greet pep tra evid en em hlana, a-hed daouzeg miz ; oh en em larda a-hed c'hweh miz gand eoul mir, hag a-hed ar c'hweh miz all gand tretou ha louzou c'hwez-vad :

13. Hag a-barz ma'z eent-i da gavoud ar roue, e oa roet dezo kement ha ma houlennet evid en em ginkla ; ha neuze ez eent euz a gambr ar merhed da gambr ar roue gand ar hinklerezou o-doa c'hoantaet da gaoud.

14. An hini a oa eet d'e gavoud diouz ar pardaez, a yee kuit diouz ar mintin, hag ahano e oa kaset en eur gambr all, e pehini edo serhed ar roue, a oa dindan dorn Susagazi ar spaz, a oa rener warnezo ; hag houmañ ne helle mui distrei da gavoud ar roue, a-eneb e youl-eñ, nemed m'en-defe he galvet-hi dre heh ano.

15. Goude eta ma oe tremenet eun amzer bennag, e teuas an deiz e pehini Ester, merh Abihail, breur Mardoche, a oa bet kemeret gand hemañ evid e verh, a dlee mond da gavoud ar roue diouz he reiz. Houmañ ne houlennas netra evid en em ginkla ; hogen Egeüs, ar spaz, mirer ar merhed-se, a roas dezi evid se ar pez a garas. Rag hi he-doa eur hendalh brao, hag a oa kaer-meurbed : hag ar re oll a wele anezi, he have hetuz ha dudiu.

16. Kaset e eo eta da gambr ar roue Asuerus en degved miz anvet Tebet, er seizved bloaz euz e ren.

17. Ar roue he haras dreist an oll wragez ; hag hi a gavas gras ha trugarez dirazañ dreist an oll wragez ; hag eñ a lakas ar gurunenn a roue war he fenn, hag a lakaas anezi da rouanez e-leh Vasti.

18. Neuze e hourhemennas ar roue ma vije aozet eur banvez kaer-meurbed d'e oll briñsed ha d'e zervijerien, evid dimezi hag eured Ester. Hag eñ a roas ehan d'e oll broviñsou, hag a roas rouou diouz galloud eur roue.

19. Ha keit ha ma oe klasket merhed evid eil dimezi ar roue, ha ma oent strollet eno, Mardoche a chomas bepred ouz dor ar roue.

20. Ester n'he-doa ket c'hoaz roet da anaoud he bro nag he fobl, hevez gourhemenn Mardoche ; rag Ester a zevene kement ha ma hourhemenne eñ ; hag

²³⁵ plah : matez.

hi a ree c'hoaz neuze evel ma oa boazet-hi da ober, pa oa maget gantañ hag hi bihan.

21. Hogen en amzer ma chome Mardoche ouz dor ar roue, Bagatan ha Tarez, daou spaz d'ar roue, pere a oa da benn war ar re a ziwalle ar perzier kenta euz e di, a zavas droug enno. Felloud a reas dezo dispaha ouz ar roue, hag e laza.

22. Mardoche o veza gouezet kement-se, e roas da anaoud d'ar rouanez Ester ; hag houmañ hel lavaras d'ar roue, e ano Mardoche, pehini en-doa e zisklêriet dezi.

23. Greet e eo enklask war gement-se, hag e oe kavet e oa gwir ; hag i a oe staget o-daou ouz ar groug. Ha kement-mañ a oe skrivet en istoriou, hag a oe merket e levriou bloazieg dirag ar roue.

III. Pennad.

Aman a fell dezañ lakaad d'ar maro ar Iuzevien oll.

1. Goude-ze ar roue Asureüs a uhellaas Aman, mab Amadat, pehini a oa euz a ouenn Agag ; hag eñ a zavas e dron dresit hini an oll briñsed a oa gantañ.

2. Hag oll zervijerien ar roue, pere a oa ouz doriou e balez, a blege o daoulin, hag a azeule Aman ; rag an Impalaer en-doa e hourhemennet dezo. Ne oe nemed Mardoche a gement na blegas ket e zaoulin dirazañ, ha na azeulas ket anezañ.

3. Ha servijerien ar roue pere a oa da benn ouz perzier ar palez a lavaras dezañ : Perag ne zentez ket evel ar re all ouz gourhemenn ar roue ?

4. Ha goude m'o-doa lavaret an dra-ze dezañ aliez, heb ma felle dezañ o zelaoui, her rojont da anaoud da Aman, evid gouzoud ma²³⁶ kendalhje en e zezo ; rag lavaret en-doa-eñ dezo penaoz e oa Iuzev.

5. Pa glevas Aman kement-se, hag o veza anavezet e-unan penaoz Mardoche ne blege ket e zaoulin dirazañ, ha na azeule ket anezañ, e savas droug braz ennañ :

6. Hogen evel netra e sellas²³⁷ lakaad e zorn war Vardoche hepken ; hag o veza klevet penaoz e oa Iuzev, e oe gwell gantañ koll oll bobl ar Iuzevien en em gave e rouantelez Asuerus.

7. Er miz kenta, a zo anvet Nisan, en daouzegved bloaz euz a ren Asuerus, e oe taolet ar sort, a zo anvet "fur" e Hebraej, el lestr dirag Aman, evid gouzoud e pe zeiz, hag e pe viz e tlee pobl ar Iuzevien beza lazet ; hag ar sort a gouezas war an daouzegved miz anvet Adar.

8. Hag Aman a lavaras d'ar roue Asuerus : Bez' ez eus eur bobl a zo skignet dre an oll broviñsou euz da rouantelez, hag a zo rannet dioutañ e-unan ; pehini a heuill lezennou ha lidou nevez, ha pehini ouspenn a zispriz gourhemennou ar roue. Ha te a oar ervad penaoz ne zere ket ouz da rouantelez e teufe c'hoaz da greski he rogoni.

9. Gourhemenn eta ma vezo kaset da get, ma her havez mad, ha me a baeo da deñzorien da espern deg mil talant²³⁸.

10. Neuze ar roue a dennas ar bizou a zouge bepred, hag e roas da Aman, mab Amadal euz a ouenn Agag, enebour ar Iuzevien.

²³⁶ ma : hag eñ

²³⁷ sellas : ne fellas ket dezañ.

²³⁸ me a baeo da deñzorien da espern deg mil talant = me a roio deg mil talant d'az teñzorien.

11. Hag e lavaras dezañ : Mir evidout an arhant a ginnigez din ; ha gra e-keñver ar bobl-se evel ma kiri.

12. Er miz kenta anvet Nisan, en trizegved deiz euz an heveleb miz e oe galvet skrivagnerien ar roue, hag e oe skrivet, e ano ar roue Assuerus, er hiz m'en-doa gourhemennet Aman, da oll renerien ar roue, ha da varnerien an oll vroadou a oa er proviñsou ; ha skrivet e oe e meur a yez, evid ma hellje beza lennet gand peb broad : hag al lizer a oe siellet gand bizou ar roue.

13. Kaset e oe gand rederien ar roue d'an oll broviñsou, evid ma vije lazet ha kaset da get an oll Iuzevien, adaleg ar yaouanka beteg ar hosa, hag ivez ar vugale hag ar merhed, en heveleb deiz, da lavaroud eo, en trizegved deiz euz an daouzegved miz anvet Adar, ha ma vije preizet o madou.

14. Setu petra a oa el lizer-ze, evid ma vije gouezet gand an oll broviñsou, ha ma vijent dare evid an deiz dilennet.

15. Ar rederien a oa kaset a yee buan, evid seveni gourhemenn ar roue. Raktal e oe staget ar gourhemenn-ze e Suza, endra ma edo ar roue hag Aman o banvezi, hag an oll Iuzevien a oa e kêr o skuilla daelou.

IV. Pennad.

Mardoche a ro da anaoud fallagriez Aman da Ester.

1. Mardoche o veza klevet kement-se a rogas e zillad, a wiskas eur zah, hag a daolas ludu war e benn ; hag eñ en em lakaas da harmi e-kreiz leur-gêr, o tiskoueza c'hwevder e galon.

2. Dond a reas eta en eur leñva evel-se beteg porz ar palez. Rag ne helled ket mond e palez ar roue gwisket gand eur zah.

3. Er proviñsou, er hêriou, hag en oll lehiou, e pere e oe kaset ar gourhemenn kriz-se euz ar roue, e oe braz ar hlahar e-touez ar Iuzevien, hag ivez ar yun, hag ar garm, hag ar gouelvan ; ha kalz anezo n'o-doa nemed ar zah hag al ludu evid gwele.

4. Neuze plahed Ester hag he spazerien a zeuas, hag a roas da anaoud kement-se dezi. Ha pa e glevas, e oe mantret ; hag hi a gasas eur zae da Vardoche, evid ma he gwiskje ha ma lezje e zah ; hogen ne fellas ket dezañ o hemeroud.

5. Hag hi a halvass Atac'h ar spaz, a oa bet roet dezi gand ar roue evid he servij, hag e hourhemennas dezañ mond da gavoud Mardoche, evid gouzoud digantañ perag e ree evel-se²³⁹.

6. Atac'h a yeas eta da gavoud Mardoche, pehini a oa e-kreiz leur-gêr dirag porz ar palez :

7. Ha Mardoche a roas da anaoud dezañ kement ha ma oa c'haorvezet ; penaoz Aman en-doa touet e tougje kalz a arhant e teñzor ar roue evid lazerez ar Iuzevien.

8. Eun diskriv a roas ivez dezañ euz ar gourhemenn a oa bet staget e Suza, evid e ziskoueza d'ar rouanez, hag he huzulia da vond da garvoud ar roue, ha da bedi stard anezañ evid he fobl.

9. Hag Atac'h a zistroas, hag a roas da anaoud da Ester kement ha m'en-doa lavaret Mardoche dezañ.

²³⁹ perag e ree evel-se : perag e evze greet evel-se gand gourhemenn ar roue.

10. Hag Ester a respontas, hag a hourhemenans da Atac'h ma lavarje kement-mañ da Vardoche :

11. Oll zervijerien ar roue, hag an oll broviñsou a zo dindan e halloud a oar penaoz mar deu hini, daoust pe gwaz, daoust pe maouez, da vond, heb beza galvet, er zal a-ziabarz, e vez lazet raktal heb mar ebed ; nemed astenni a rafe ar roue dre zarvoud etrezeg ennañ e walenn-roue aour, evel arouez a habaskted, ha dre ze ma hello beva. Penaoz eta e helljen-me mond da gavoud ar roue, pa n'on ket bet galvet gantañ tregont devez a zo ?

12. Pa glevas Mardoche kement-se,

13. E kasas adarre etrezeg Ester, evid lavaroud dezi : Na gred ket penaoz, evidout da veza e ti ar roue, e hellfes savetei da vuhez, gwelloh eged an oll Iuzevien.

14. Rag mar tavez bremañ, en eun doare all e vezo dieubet ar Iuzevien ; ha te, ha ti da dad a vezo kollet. Ha piou a oar ma n'eo ket evid se out bet savet da rouanez, ma vijes dare evid eun heveleb amzer ?

15. Hag Ester a gasas adarre da lavaroud kement-mañ da Vardoche :

16. Kee ha stroll an oll Iuzevien a gavi e Suza, ha pedit evidon. Na zebrit, na na evit a-hed tri devez ha teir nozvez ; ha me ivez a yuno gand va flahed ; ha goude-ze ez in da gavoud ar roue a-eneb al lezenn, hag heb beza galvet, oh en em rei d'ar gwall ha d'ar maro.

17. Mond a reas eta Mardoche, hag e reas ar pezh he-doa gourhemennet Ester dezañ.

V. Pennad.

Ar roue a ya gand Aman da vanvezi da di Ester.

1. Hogen an trede deiz Ester a wiskas he dillad rouanez ; mond a reas er zal a-ziabarz euz a di ar roue, hag e chomas eno dirag e gambr ; ar roue a oa azezet war e dron, e speurenn-wele e gambr, war eneb da zor e gambr.

2. Ha pa welas ar rouanez Ester a oa en he sav, e hetas-hi dezañ, hag eh astennas etrezeg enni ar walenn-roue en-doa en e zorn. Hg hi a dostaas, hag a bokas da benn ar walenn-roue.

3. Hag ar roue a lavaras dezi : Petra a fell dit, rouanez Ester ? Petra a houlennez ? Ha pa houlennef an hanter euz va rouantelez, he rofen dit.

4. Hag Ester a lavaras dezañ : Pedi a ran ar roue da zond hirio, mar kar, hag Aman gantañ, d'ar banvez em-eus aozet.

5. Galvit Aman raktal, eme ar roue, evid ma sento ouz youl Ester. Ar roue hag Aman a zeuas eta d'ar banvez he-doa ar rouanez aozet evito.

6. Hag ar roue a lavaras dezi, goude m'en-doe evet kalz a win : Petra a fell dit a rofen dit, ha petra a houlennez ? Ha pa houlennef an hanter euz va rouantelez, he rofen dit.

7. Hag Ester a lavaras dezañ : Setu va goulenn ha va fedenn.

8. Ma em-eus kavet gras dirag ar roue, ha ma fell dezañ aotrea din ar pezh a hoantaan hag a houlennef ; deuet ar roue, hag Aman gantañ, d'ar banvez em-eus aozet dezo, ha warhoaz e roin da anaoud va hoant d'ar roue.

9. Aman eta a yeas er-mêz en deiz-se, hag eñ laouen ha dreo. Hogen pa welas penaoz Mardoche pehini a oa azezet e-tal porz ar palez, na oa ket savet evitañ, ha

na oa ket zoken fiñvet euz al leh e pehini e oa azezet, e savas eun droug braz ennañ :

10. Hag o kuza e vuanegez, e tistroas d'e di, hag e strollas e vignoned ha Zarez e wreg.

11. Hag e komzas dezo euz a vrazder e vadou, euz an niver braz euz e vibien, hag euz ar hloar vraz da behini en-doa e zavet ar roue dreist e oll briñsed hag e oll zervijerien.

12. Ha goude-ze e lavaras : Ar rouanez Ester n'he-deus ivez galvet nemedon d'ar banvez he-deus greet evid ar roue ; ha warhoaz e leinin adarre en he zi gand ar roue.

13. Petra bennag ma em-eus kement-se, e kav din n'am-eus netra, keit ha ma welin Mardoche, ar Iuzeo, azezet e-tal porz ti ar roue.

14. Ha Zarez, e wreg, hag e oll vignoned a lavaras dezañ : Laka da zevel eur groug, hag he-devezo hanter-kant ilinad a uhelder, ha lavar d'ar roue warhoaz vintin ma lakai da staga outi Mardoche ; hag evel-se ez i laouen d'ar banvez gand ar roue. Ar huzul-ze a oe kavet mad gand Aman, hag eñ a lakaas da zevel eur groug uhel.

VI. Pennad.

Ar roue a laka da enori Mardoche. Mezegez Aman.

1. Digousk e tremenas ar roue an noz-se, hag eñ a hourhemennas ma vije degaset dezañ an istoriou hag al levriou bloazieg diwar-benn an amzeriou diagent, ha pa o lennent dirazañ,

2. E teujont d'al leh e pehini e oa skrivet penaoz en-doa Mardoche roet da anaoud dispah Bagatan ha Tarez ar spazeien, pere a felle dezo laza ar roue Asuerus.

3. Pa glevas ar roue kement-se, e lavaras : Pe enor, ha pe hobr a zo bet roet da Vardoche evid al lealded-se ? Hag e zervijerien hag e vinistred a lavaras dezañ : N'en-deus bet gobr ebed.

4. Hag ar roue a lavaras : Piou a zo er zal a-ziabarz ? Aman eo e oa eet er zal a-ziabarz euz a di ar roue, evid e bedi da hourhemenni ma vije staget Mardoche ouz ar groug en-doa aozet evitañ.

5. Hag e baotred a lavaras dezañ : Aman eo a zo er zal. Hag ar roue a lavaras : Ra zeuy e-barz.

6. Ha pa oe deuet Aman e-barz, ar roue a lavaras dezañ : Petra a dleer da ober d'an den a fell d'ar roue da enori ? Hogen Aman o venna en e galon, hag o kredi penaoz ne felle d'ar roue enori nemetañ,

7. A lavaras : An den a fell d'ar roue da enori,

8. A dleer da wiska gand dillad ar roue, hag e lakaad war ar marh war pehini e pign ar roue, ha kurunenn ar roue war e benn ;

9. Hag ar henta euz ar briñsed hag euz a renerien ar roue a zalho e varh, hag en eur vond a harmo war al leur-gêr, o lavaroud : Evel-henn e vezo enoret piou bennag a fello d'ar roue da enori.

10. Hag ar roue a lavaras dezañ : Hast, kemer ar zae hag ar marh, ha gra, evel ma eh-eus lavaret, e-keñver Mardoche, ar Iuzeo, a zo azezet e-tal porz ar palez. Laka evez na ankounac'hafes netra euz ar pezh eh-eus lavaret.

11. Aman a gemeras eta ar zae hag ar marh, ha goude beza gwisket ar zae da Vardoche el leur-gêr, ha goude beza e lakaet da bigna war ar marh, ez ee en e raog, hag e harme evel-henn : En doare-mañ e tle beza enoret piou bennag a fell d'ar roue da enori.

12. Mardoche a zistroas ouz porz ar roue : hag Aman a hastas mond d'e di, en eur ouela, hag o holei e benn.

13. Hag eñ a zanevellas da Zarez, e wreg, ha d'e vignoned, ar pez a oa c'hoarvezet gantañ. Hag ar re fur a oa en e guzul, hag e wreg, a lavaras dezañ : Mar deo euz a ouenn ar luzevien ar Mardoche-ze dirag pehini eh-eus deraouet da goueza, ne helli ket enebi outañ ; hogen dirazañ e kouezi.

14. Pa gomze c'hoaz ar re-mañ, e teuas spazeien ar roue, pere a redias anezañ da vond d'ar banvez he-doa aozet ar rouanez.

VII. Pennad.

Krouget eo Aman ouz ar groug en-doa savet evid Mardoche.

1. Ar roue eta hag Aman a zeuas evid eva gand ar rouanez.

2. Hag ar roue a lavaras c'hoaz dezi en eil devez-se, pa oe deuet da veza tomm dezañ gand ar gwin : Petra a houlennez, Ester, ha petra a fell dit e rafen ? Ha pa houlennez an hanter euz va Rouantelez, he rofen dit.

3. Hag hi a lavaras dezañ : Ma em-eus kavet gras dirag da zaoulagad, o ! roue, ha ma e gavez mad, ro din va buhez a houlennez diganez, hag hini va fobl, evid pehini az pedan.

4. Rag gwerzet om bet, me ha va fobl, evid beza mahet, evid beza lazet, evid beza dispennet. A-youl e vem gwerzet da sklaved ha da sklavezed, gouzañvuz e ve an droug ; tevel a rajen en eur geina. Hogen bremañ on-eus eun enebour kriz, hag e grizder a gouez war ar roue.

5. Hag ar roue Asuerus a lavaras dezi : Piou eo hennez ? Ha piou a zo galloudeg a-walh evid kredi ober kement-se ?

6. Hag Ester a lavaras : On enebour hag on enebour touet eo Aman ar fallagr. Pa glevas Aman kement-se, e oe saouzanet raktal, ha ne hellas ket gouzañvi sellou ar roue hag ar rouanez.

7. Hogen ar roue o veza savet droug ennañ, a yeas er-mêz euz a leh ar banvez, hag ahano en eur harz²⁴⁰ leun a wez. Aman ivez a zavas evid pedi ar rouanez Ester da zavetei e vuhez dezañ ; rag gwelet en-doa penaoz ar roue a aoze droug dezañ.

8. Asuerus o veza distroet euz ar harz leun a wez, hag o veza deuet e leh ar banvez, a gavas Aman, pehini a oa en em daolet war ar gwele e pehini e oa gourvezet Ester, hag e lavaras : Hag-eñ e fell ivez dezañ gwalla ar rouanez dirazon, hag em zi ? A-veh ma oa eet ar ger-ze er-mêz euz a henou ar roue ma oe goloet e benn da Aman.

9. Hag Harbona, unan euz ar spazerien pere a oa e servij ar roue, a lavaras dezañ : Setu ez eus e ti Aman eur groug euz a hanter-kant ilinad a uhelder, a zo bet savet gantañ evidid Mardoche, pehini en-doa komzet evid ar roue. Hag ar roue a lavaras : Stagit eñ outi.

²⁴⁰ eur harz : eul liorz.

10. Aman a oe eta staget ouz ar groug en-doa aozet evid Mardoche, ha droug ar roue a habaskaas.

VIII. Pennad.

Ar roue a dorr ar gourhemennou a oa bet roet a-eneb ar Iuzevien.

1. En deiz-se ar roue Asuerus a roas d'ar rouanez Ester ti Aman, enebour ar Iuzevien, ha Mardoche a yeas dirag ar roue. Rag Ester he-doa anzavet d'ar roue penaoz e oe hemañ eontr dezi.

2. Hag ar roue a gemeras ar bizou en-doa lakaet da denna euz a zorn Aman, hag e roas da Vardoche. Ester a lakaas ivez Mardoche da rener euz he zi.

3. Ester ne gavas ket a-walh kement-se ; en em deurel a reas da dreid ar roue, gouela a reas, hag e pedas anezañ ma kasje da get an drougiez hag ar gwall dispahiou en-doa greet Aman, an Argagiad, a-eneb ar Iuzevien.

4. Hga ar roue a astennas etrezeg enni e walenn roue aour, evel ma oa boazet da ober, evid diskoueza e habaskted ; hag hi a zavas hag a chomas en he sav dirazañ.

5. Hag a lavaras : Mar plij gand ar roue, ha ma em-eus kavet gras dirag e zaoulagad, ha ma ne gav ket dizoare va fedenn, e pedan ahanout da derri gand eul lizer nevez, al lizer koz en-doa skrivet Aman, enebour touet d'ar Iuzevien, dre behini en-doa gourhemennet ma vije dispennet ar re-mañ e oll broviñsou ar roue.

6. Rag penaoz e hellfen-me gouzañvi maro ha dispenn va fobl ?

7. Hag ar roue Asuerus a lavaras d'ar rouanez Ester ha da Vardoche, ar Iuzeo : Ti Aman em-eus roet da Ester, ha gourhemennet em-eus e vije satget eñ ouz ar groug, o veza m'en-doa kredet lakaad e zorn war ar Iuzevien.

8. Skrivit eta evid ar Iuzevien, evel ma kerot, e ano ar roue, ha siellit al liziri gand va bizou. Rag diouz ar boaz, den ne grede enebi ouz al liziri a oa kaset e ano ar roue, ha siellet gand e vizou.

9. Kmenennet e eo raktal skribed ha skrivagnerien ar roue (rag edod en trede miz anvet Sibab), hag an trede deiz warn-ugent euz ar miz-se e oe skrivet al liziri, evel ma fellas da Vardoche, d'ar Iuzevien, d'ar briñsed, d'ar renerien ha d'ar varnerien a oa da benn war ar seiz proviñs ha c'hweh-ugent euz ar rouantelez, adaleg an India beteg an Etiopia ; hag i a oe skrivet e meur a yez, evid ma hellfent beza lennet ha beza klevet gand tud ar proviñsou hag ar broadou, hag ivez gand ar Iuzevien.

10. Hag al liziri-ze pere a oa skrivet e ano ar roue, ha siellet gand e vizou, a oe kaset gand rederien war varh, pere o vond ar buanna ma hellent, a dlee diaraogi al lizeri koz gand al lizeri nevez.

11. Ar roue a hourhemennas ivez d'ar re-mañ ma'z ajent da gavoud ar Iuzevien e pep kêr, m'o lakajent d'en em strolla kevred, ha d'en em aoza evid difenni o buhez, evid laza ha dispenna o oll enebourien, gand o bugale, hag o gwragez, hag o oll ziez, hag evid preiza o oll zibourhou.

12. Ha merket e oe d'an oll broviñsou eun heveleb deiz evid ar veñjañs, da lavaroud eo an trizegved deiz euz an daouzegved miz anvet Adar.

13. Hag an abeg kenta euz al liziri-ze a oe, da rei da anaoud dre an oll vroioù ha d'an oll boblou a oa dindan galloud ar roue Asuerus, penaoz e oa dare ar Iuzevien d'en em veñji euz o enebourien.

14. Hag ar rederien war varh en em lakaas raktal en hent evid kas al liziri ; ha gourhemenn ar roue a oe staget e Suza.

15. Hogen Mardoche o vond er-mêz euz ar palez hag euz a-zirag ar roue, en-doa dillad roue kaer, glaz ha pers, hag eur gurunenn aour war e benn, hag eur vantell seiz ha moug war e ziskoaz. Hag ar gêr oll a ebatas hag en em laouennaas.

16. E-keñver ar Iuzevien, e kavas dezo e save warnezo eur goulou nevez ; gand al levenez-se, an enor hag ar veuleudi.

17. E-touez an oll boblou, hag ar proviñsou, hag ar hêriou e pere e teuas gourhemenn ar roue, e oe eul levenez anad, festou ha banveziou ha deiziou gouel ; en heveleb doare ma teuas kalz euz ar broadou all, pere a oa disheñvel diouto en o hredenn, d'en em unvani gand o hredenn ha gand o lidou ; o veza m'en-doa ano ar Iuzevien taolet eur spont braz en o zouez.

IX. Pennad.

Ar Iuzevien, hervez gourhemenn ar roue, a laz ar re o-doa mennet o has i da get.

1. Evel-se en trizegved deiz ezuz an daouzegved miz, on-eus lavaret kent a oa anvet Adar, pa en em aozed da laza an oll Iuazevien, ha ma oa youlet o gwad gand o enebourien, ar Iuzevien en eneb a zeraouas beza re ra greñva, hag en em veñji euz o eneborien.

2. En em strolla a rejont en oll gêriou, ar bourhiou, hag el lehiou all, evid stourmi ouz o enebourien hag o heskinerien ; hag hini anezo ne gredas ober penn dezo, rag ar spont euz o nerz a oa kroget en oll boblou.

3. Rag barnerien ar proviñsou, hag an duged, hag ar renerien, ha kement hini a oa e peb leh da benn war al labouriou, a veule ar Iuzevien gand ar spont o-doa rag Mardoche ;

4. O veza ma ouient penaoz e oa eñ da vestr braz er palez, ha m'en-doa kalz a halloud ; e ano-mad a greske bemdez hag en em gave e genou an oll.

5. Ar Iuzevien a skoas eta stard war o enebourien, hag a lazas anezo, o tisteurel warnezo an droug aozet evito ;

6. En heveleb doare ma oe lazet e Suza beteg pemp kant den, heb niveri an deg mab Aman ; mab Agag, enebour ar Iuzevien ; a bere setu amañ an anoïou :

7. Farsandata, ha Delfou, hag Esfata,

8. Ha Forata, hag Adalia, hag Aridata,

9. Ha Fermesta, hag Arisai, hag Aridai, ha Jezata.

10. Pa o-doe o lazet, ne fellas ket dezo kemered preiz ebed warnzo.

11. Roet e oe raktal da anaoud d'ar roue an niver euz ar re a oa bet lazet e Suza.

12. Hag eñ a lavaras d'ar rouanez : E kêr Suza o-deus lazet ar Iuzevien pemep kant den, heb niveri an deg mab Aman : peger braz e vennez-te eo al lazerez a reont en oll broviñsou ? Petra a houlennez-te ouspenn, ha petra a fell dit a hourhemennfen c'hoaz ?

13. Hag ar rouanez a lavaras : Mar kav mad ar roue, bezet roet d'ar Iuzevien ar galloud da ober adarre warhoaz e Suza evel ma o-deus greet hirio, ha bezet staget an deg mab Aman ouz ar groug.

14. Hag ar roue a hourhemennas ma vije greet evel-se ; ha raktal e oe staget ar gourhemenn-ze e Suza ; hag an deg mab Aman a oe krouget.

15. Ar Iuzevien o veza c'hoaz en em strollet er pevarzegved deiz euz a viz Adar, a lazaz e Suza tri-hant den ; hogen ne gemerjont preiz ebed warnezo.

16. Ar Iuzevien en em zalhas ivez dare, en oll broviñsou a oa dindan galloud ar roue, evid diwalloud o buhez, hag e lazjont o enebourien hag o heskinerien ; en heveleb doare ma kouezas el lazerez-se pemzeg mil ha tri-ugent mil²⁴¹ ; hag hini euz ar Iuzevien ne gemeras preiz ebed warnezo.

17. An trizegved deiz euz a viz Adar a oe ar henta e pehini en em lakajont oll da laza, hag er pevarzegved deiz eh ehanjont al lazerez. Hag i a reas anezañ eun deiz gouel, evid e dremenoud da viken el lid, el levenez, hag er banveziou.

18. Hogen ar Iuzevien a oa e kêr Suza o-doa greet al lazerez en trizegved hag er pevarzegved deiz euz ar miz-se ; hag i o-doa ehanet er pemzegved deiz. Rag se e verkjont an deiz-se evid eun deiz a lid, a vanveziou, hag a levenez.

19. Ar Iuzevein a chome er hêriou divur hag er bourhiou a lakaas ar pevarzegved deiz a viz Adar evid eun deiz a vanvez hag a levenez ; hag ennañ eo en em laouennaont, hag e kasont an eil d'egile lod euz a voued o banvez.

20. Mardoche a skrivas kement-se : hag o veza e lakaet en eul lizer, e kasas anezañ d'ar Iuzevien a chome e oll broviñsou ar roue, ken a-dost, ken a-bell,

21. Evid ma kemerjent da ouel ar pevarzegved hag ar pemzegved deiz euz a viz Adar, ha ma lidjent anezañ beb bloaz en heveleb deiziou :

22. O veza m'o-doa ar Iuzevien en em veñjet en deiziou-ze euz o enebourien, ma oa troet o hañv hag o glahar e laouenidigez hag e dudi ; ha ma vije an deziou-ze deiziou a vanvez hag a levenez, ma kasje boued an eil d'egile, ha ma rajent rouigou d'ar beorien.

23. Ar Iuzevien a reas eta eur gouel lid euz ar pez o-doa deraouet da ober en amzer-ze, hervez m'en-doa Mardoche e hourhemennet dezo dre e liziri.

24. Rag Aman, mab Amadat euz a ouenn Agag, enebour touet d'ar Iuzevien, en-doa mennet ober droug dezo, o laza, hag o has da get ; hag eñ en-doa taolet fur²⁴², a zo anvet sort en or yez-ni.

25. Ha goude-ze Ester a yeas da gavoud ar roue, hag a bedas anezañ da ziarbenna gwall-youl Aman gand eul lizer e ano ar roue ; ha ma tistroje war e benn e-unan an droug en-doa mennet ouz ar Iuzevien. En diwez staget e oe eñ ouz ar groug, hag e vibien ivez.

26. Rag se abaoe neuze an deziou-ze a zo bet anvet Furim, da lavaroud eo euz ar sortou ; o veza ma oa bet taolet fur, da lavaroud eo ar sort, en eul lestr. Hag el lizer-ze, pe el levr-se e oe lakaet kement a hoarvezas neuze :

27. Ar Iuzevien eta e koun euz ar pez o-doa gouzañvet, hag euz ar pez a oa deuet da drei goude, en em redias, i hag o gouenn, hag ar re oll en em unvanje ouz o feiz, da lida an daou zevez-se, hevez ar pez a zo merket er skrid-se, hag a zo sevenet beb bloaz, evid deiziou ar gouel-ze.

28. An deziou-ze eo hag ne vezint ket tennet morse euz a goun an dud, hag e vezint lidet en oll broviñsou a rumm e rumm dre an douar oll. Ha n'eus kêr ebed e pehini deziou Furim, da lavaroud eo deziou ar sortou, n'int ket lidet gand ar Iuzevien, ha gand o gouenn, evid pere int eun dra red.

29. Ar rouanez Ester, merh Abihail, ha Mardoche ar Iuzeo, a skrivas c'hoaz eun eil lizer, evid ma vije lakaet gand preder an deiz-se da lid da viken.

²⁴¹ pemzeg mil ha tri-ugent mil : 75.000.

²⁴² fur : "pur" = ar sort (?)

30. Hag i a gasas anezañ d'an oll Iuzevien a chome er seiz proviñs ha c'hweh-ugent euz ar roue Asuerus, evid m'o-defe ar peoh hag ar wirionez,

31. O sevel deiziou ar sortou ; hag oh o lida en o amzer gand levez. Ar Iuzevien eta en em engouestlas, hervez gourhemenn Mardoche hag Ester, da viroud, i hag o gouenn, deizou lid ar sortou, gand ar yunou hag ar garmou.

32. Ha kement a zo el levr-se a zo anvet Ester.

X. Pennad.

Galloud Mardoche. Huñvre Mardoche.

1. Hogen ar roue Asuerus a lakaas an douar oll hag oll inizi ar mor da baea gwiriou dezañ.

2. Ha skivet eo e levriou ar Vedied hag ar Bersied peger braz eo bet e halloud hag e veli, ha pegen uhel eo bet savet gantañ galloud Mardoche.

3. Ha penaoz Mardoche, euz a ouenn ar Iuzevien, a oa da eil d'ar roue Asuerus ; penaoz e oe braz e-touez ar Iuzevien, ha karet braz gand e vreuteur, o klask mad e bobl ; hag o komza euz ar pezh a zell ouz peoh e ouenn.

Beteg-henn em-eus troet gand gwirionez ar pezh em-eus kavet e levriou an Hebreed. Hogen ar pezh a zo war-lerh, em-eus e gavet en eul levr skrivet e yez ar Hresianed ha gand o lizerennou. Ha koulskoude ar pennad-se a zo bet lakaet goude ar penn diweza euz al levr ; hag hervez ma om boazet da ober, on-eus e verket gand eun taol²⁴³, da lavaroud eo, gand eur ber²⁴⁴.

4. Ha Mardoche a lavaras : Gand Doue eo bet greet kement-se.

5. Koun em-eus euz a eun huñvre am-eus bet, hag a verke ar pezh a zo c'hoarvezet ; ha netra n'eo chomet heb beza sevenet.

6. Eur feunteun vihan a welis, pehini a greskas hag a zeuas da ster, hag a oe troet en eur houlaouenn hag en eun heol, hag en em fennas e kalz a zoureier : Ester eo, en-deus kemeret ar roue da wreg, hag eo bet fellet dezañ lakaad da rouanez.

7. An daou êrouant : me eo hag Aman.

8. Ar poblou en em strollas ; ar re-ze eo pere a strivas da gas da get ano ar Iuzevien.

9. Va fobl : Izrael eo pehini a harmas ouz an Aotrou, hag an Aotrou a zieubas e bobl ; hag eñ a dennas peb droug diwarnom, hag a reas aroueziou braz ha burzudou e-touez ar broadou.

10. Hag eñ a hourhemennas e vije daou zarvoud, unan evid pobl Doue, hag egile evid ar poblou all.

11. Hag an daou zarvoud-se a zeuas dirag Doue en deiz a oa bet merket a-neuze d'an oll boblou.

12. Hag an Aotrou en-doa koun euz e bobl, hag en-doe truez ouz he degouez :

13. Hag an deiziou-ze a vezo lidet e miz Adar, ar pevarzegved hag ar pemzegved deiz ar miz : hag ar bobl en em strolle gand preder ha gand levez evid se, bremañ ha keit ha pado pobl Izrael.

²⁴³ eun taol : ?

²⁴⁴ eur ber : ?

XI. Pennad.

Huñvre all Mardoche.

1. Er pevare bloaz euz a ren Ptolemeüs ha Kleopatra, Dositeüs, pehini a lavare e oa beleg, hag euz a ouenn Levi, ha Ptolemeüs e vab, a zegasas al lizer-mañ euz a Furim, a lavarent e oa bet troet e Jeruzalem gand Lisimakus, mab Ptolemeüs.

An dra-mañ eo an derou euz a levr vulgat ar Hresianed ; hogen n'en em gav ket e levriou an Hebreed, nag e levr all ebed.

2. En eil bloaz euz a ren Artaksersez ar braz-meurbed, en deiz kenta euz a viz Nisan, Mardoche, mab Jair, mab Semei, mab Kis, euz a vreuriez Benjamin, en-doe eun huñvre :

3. Iuzeo e oa, hag e chome e kêr Suza, den brudet-braz, hag euz ar re genta e lez ar roue.

4. Eñ a oa unan euz ar sklaved a oa bet dezouget gand Nabukodonozor, roue Babilon, euz a Jeruzalem gand Jekonias, roue Juda.

5. Ha setu e hunnvre : eñ a venne e kleve moueziou, ha savariou, ha kurunou, ha krenou-douar, hag eur reustl braz war an douar :

6. Ha setu e welas daou êrouant, pere a oa dare da stourm an eil ouz egile.

7. Ouz o hlevoud, an oll vroadou en em zispahas evid stourmi ouz pobl ar re wirion.

8. Hag an deiz-se a oae eun deiz a deñvalijenn hag a wall, a hlahar hag a anken, hag euz a eur spont braz war an douar.

9. Ha pobl ar re wirion a oa reustlet braz gand ar spont rag an droug a aozed dezi ; hag hi a oa dare d'ar maro.

10. Garmi a rejont ouz Doue, hag endra ma harment, eur feunteun vihan a zeuas da eur ster vraz, hag en em fennas e kalz a zoureier.

11. Ar goulou hag an heol a zavas : ar re uvel a oe uhellaet, hag a lonkas ar re halloudeg.

12. Mardoche o veza gwelet kement-se, hag o veza savet euz e wele, a venne ennañ e-unan petra a felle da Zoue da ober ; hag eñ hel lakaas stard en e galon gand ar c'hoant en-doa da houzoud petra e oa e huñvre da lavaroud.

XII. Pennad.

Dispah disklêriet gand Mardoche.

1. En amzer-ze e chome Mardoche e lez ar roue, gand Bagata ha Tara, spazerien ar roue, pere a oa da benn war porzerien ar palez.

2. Pa en-doe lakaet evez ouz o mennoziou, ha pa en-doe sellet piz ouz o dezo, eh anavezaz penaoz e lakaent o striv da zavel a-eneb ar roue Artaksersez ; hag eñ e roas da anaoud d'ar roue ;

3. Hag ar roue a lakaas o barna o-daou ; ha pa oe anzavet o gwall ganto, e hourhemennas ma vijent kaset d'ar maro.

4. Ar roue a skrivas e rollou ar pezh a oa c'hoarvezet : ha Mardoche e lakaas ivez dre skrid evid na vije ket ankounac'haet.

5. Hag ar roue a hourhemennas dezañ ma'z aje da chom en e balez, goude ma oe roet dezañ eun dra bennag evid ar pezh en-doa disklêriet.

6. Hogen Aman, mab Amadat ar Bugead, a oa leun a hloar dirag ar roue ; hag eñ a fellas dezañ kas da get Mardoche hag e bobl en abeg d'an daou spaz d'ar roue a oa bet lakaet d'ar maro.

Beteg amañ ema an derou, ar pezh a zo goude a oe lakaet en e leh, e peleh e oa skrivet el levr : Hag i a skrapas o madou, pe o danvez. An dra-mañ n'eo bet kavet ganeom neemd e levr ar vulgat : Hogen setu an diskriv euz al lizer.

XIII. Pennad.

Lizer Aman a-eneb ar Iuzevien. Pedenn Mardoche.

1. Ar roue braz-meurbed Artaksersez, pehini a ren adaleg an India beteg an Etiopia, war seiz proviñs ha c'hweh-ugent, d'ar briñsed ha d'an duged a zo dindan e veli, salud.

2. Petra bennag ma renfen war gemend-all a boblou, ha m'am-boa lakaet ar bed oll dindan va beli, n'eo ket fellet din gwall-ober gand va galloud braz, hogen renet eo bet ganen va zujidi gand habaskted ha gand kuñvez, evid ma teujent da veva sioul hag heb aon, ha m'o-divije ar peoh a zo ken youlet gand an dud oll.

3. Hag o veza goulennet digand va huzulierien penaoz e hellfen seveni kement-se, unan anezo, anvet Aman, pehini a zo fur ha leal dreist ar re all, hag a zo an eil goude ar roue,

4. En-deus roet da anaoud din penaoz ez eus eur bobl a zo skignet dre ar bed oll, pehini a heuill lezennou nevez a-eneb ouz boaziou ar poblou all, a zispriiz gourhemennou ar roueed, hag a reustl gand e unvaniez an oll vroadou.

5. Pa on-eus klevet kement-se, ha pa on-eus gwelet penaoz eur bobl hepken a zispah ouz ar re all oll, oh heulia gwall lezennou, oh enebi ouz or gourhemennou, hag o reustla ar peoh, hag an unvaniez euz ar proviñsou a zo dindan or beli,

6. On-eus gourhemennet penaoz ar re oll a vezo roet da anaoud gand Aman, pehini eo rener war an oll broviñsou, hag an eil goude ar roue, hag a enorom e leh²⁴⁵ on tad, a vezo kaset da get gand dorn o enebourien, i hag o gwragez hag o bugale, heb ma en-devezo den truez outo, er pevarzegved deiz euz a Adar, en daouzegevd miz euz ar bloaz-mañ :

7. Evid ma tiskenno an dud fallagr-se er bez en eun heveleb deiz, ha ma roint a-nevez ar peoh d'or rouantelez, o-deus reustlet.

Beteg amañ ema diskriv al lizer, ar pezh a zo war-lerh, em-eus kavet skrivet goude-ze, e peleh e lenner : Ha Mardoche a yeas, hag a reas kement he-doa Ester gourhemennet dezañ. Koulskoude n'ema ket en Hebre, ha n'her haver ket hed-dahed e skrivganer ebed.

8. Hogen Mardoche a bedas an Aotrou, gand ar houn en-doa euz e oberiou.

²⁴⁵ e leh : ?

9. Hag e lavaras : Aotrou, Aotrou, roue ollhalloudeg ; rag kement tra en em gav dindan da veli, ha den ne hell enebi ouz da youl, ma eh-eus lakaet en da benn tenna Izrael a boan.

10. Te eh-eus greet an neñv hag an douar, ha kement a zo dindan an neñv.

11. Te eo an Aotrou euz a bep tra, ha n'eus hini a gement a enebfe ouz da veurded.

12. Ta a anavez pep tra, hag a oar penaoz ma n'em-eus ket azeulet Aman ar balh, n'eo ket dre rogoni, na dre fae, na dre youl hloar ebed ;

13. (Rag dare e vijen bet zoken da boki da roudou e dreid gand levenez evid dieub Izrael).

14. Hogen aon em-eus bet na zezougfen da eun den an enor ha n'eo dleet nemed d'am Doue, ha na azeulfen unan bennag ha n'eo ket va Doue.

15. Bremañ eta, Aotrou roue, Doue Abraham, az-pezh truez ouz da bobl, o veza ma fell d'on enebourien or has da get ha bevezi da zegouez.

16. Na zispriz ket da lod²⁴⁶, eh-eus dasprenet euz an Ejipt evid beza dit.

17. Selaou mad va fedenn, ha bez trugarezuz e-keñver ar re a zo dit evel ar sort hag dre ar gordenn²⁴⁷. Tro on daerou e levenez, evid ma vevim ha ma veulim, Aotrou, da ano ; ha na zerr ket genou ar re a gan da veuleudiou.

18. Izrael oll a harmas ivez ouz an Aotrou, gand eun heveleb kalon hag eun heveleb pedenn, o veza ma en em welent e-tal da vervel.

XIV. Pennad.

Pedenn Ester.

1. Ester ivez a glakas skoazell digand an Aotrou, spontet ma oa-hi gand ar gwall a oa ken tost.

2. Ha goude ma he-doa tennet he saeou a rouanez, e kemeras dillad par d'he daerou hag d'he hañv : hag e-leh louzou c'hwez-vad, e holoas he fenn gand ludu ha gand saotr ; hag hi a uvellaas he horv gand ar yuniou. Leunia a ree gand he bleo a denne euz he fenn al lehiou e pere kent en em laouennae.

3. Hag hi a bedas an Aotrou, Doue Izrael, o lavaroud : Va Aotrou, pehini hepken eo or roue, skoazell ahanon pa on dilezet, ha pa n'eus nemedout a hellfe va skoazella.

4. Em daouarn ema va gwall.

5. Klevet em-eus gand va zad, o ! Aotrou, penaoz eh-eus kemeret Izrael e-touez an oll boblou, ha ma eh-eus dilennet on tadou e-kreiz o gourdadou, evid ober dit eun degouez peurbaduz, ha ma eh-eus greet en o heñver evel m'az-poa lavaret.

6. Pehet on-eus dirazout, ha dre ze eh-eus ol lakaet etre daouarn on enebourien.

7. Hag o doueed on-eus azeulet. Te a zo gwirion, Aotrou :

8. Ha bremañ n'eo ket a-walh dezo or gwaska gand eur sklaverez ar haleta, hogen o lakaad nerz o divreh war galloud o idolou,

²⁴⁶ da lod : ? (da bobl).

²⁴⁷ ar sort hag dre ar gordenn : ?

9. E fell dezo trei da lavariou ; ha kas da get da zegouez, ha serra o genou d'ar re a veul ahanout, ha mouga gloar da dempl ha da aoter,

10. Evid ma tigorint genou ar broadou, dre ma veulint galloud o idolou, ha ma embannint da viken eur roue kig²⁴⁸.

11. Na ro ket, Aotrou, da walenn d'ar re pere n'int netra, gand aon na rajent goap euz on dispennadur ; hogen distro o hozni warnezo o-unan, ha koll an hini en-deus deraouet ober droug deom.

12. Aotrou, az-pezh koun ahanom, hag en em ziskouez deom e amzer or glahar, ha ro din fiziañs, o ! Aotrou ; roue an doueed hag euz an oll halloud.

13. Laka eul lavar deread em genou dirag al leon, ha laka e galon da gasaad on enebour, evid ma varvo hemañ, hag ar re a zo a-unan gantañ.

14. Hogen tenn ahanom a boan gand da zorn, ha skoazell ahanon, pa n'em-eus skor all nemedout, o ! Aotrou, te pehini a oar pep tra,

15. Hag a anavez penaoz e kasaan gloar ar re fallagr, hag eh argarzan gwele ar re ziemwad, hag ar re oll a-ziavêz bro.

16. Te a anavez va redi, ha penaoz en deizioù pere e tlean en em ziskoueza gand fouge ha gand gloar, eh argarzan an arouez a sked a zougan war va fenn, ha penaoz e kasaan anezi e doare eul lienenn saotret, ha n'he dougan ket e deizioù va zav,

17. Ha penaoz n'em-eus ket debret ouz taol Aman, ha n'eo ket bet hetet ganen banvez ar roue, ha n'em-eus ket evet gwin ar braoued-kinnig.

18. Ha penaoz abaoe ma on bet degaset amañ ha beteg bremañ, biskoaz da vatez n'eo en em laouennet, nemed ennout, Aotrou, Doue Abraham.

19. Doue kreñv dreist an oll, selaou ouz pedenn ar re pere n'o-deus ged ebed nemed ennout, dieub ahanom euz a zorn ar re fallagr, ha tenn ahanon euz ar pezh a ra aon din.

XV. Pennad.

Mardoche a hourhemenn da Ester mond da gavoud ar roue.

An dra-mañ em-eus kavet ivez er vulgat.

1. Hag eñ a hourhemennans dezi (heb arvar Mardoche da Ester) ma'z aje da gavoud ar roue, ha ma pedje anezañ evid he fobl hag evid he bro.

2. Az-pezh koun, emezañ, euz a zeizioù da uvelded, ha penaoz out bet maget eter va daouarn ; rag Aman, an eil goude ar roue, en-deus komzet outañ en on eneb evid e lakaad d'ol laza :

3. Hogen te, ped an Aotrou, komz ouz ar roue evidom, ha dieub ahanom euz ar maro.

Hag ivez ar pezh a zo war-lerh.

4. En trede deiz Ester a ziwiskas he dillad pemdez, hag a lakaas war he zro he dillad ar re gaerra.

5. Er sked euz a zoare eur rouanez, ha goude beza pedet Doue, rener ha Salver an oll, e kemeras diou euz he flahed ;

²⁴⁸ eur roue kig : ?

6. Hag hi en em harpe war unan anezo, evel ma ne hellje ket dezougen he hoof, en abeg d'he hizidigez ha d'he gwander :

7. Ar plah all a yee war-lerh heh itron, hag a zouge he sae a stleje war an douar.

8. Hogen hi gand eun dremm e liou ar roz, hag he daoulagad beo ha lugernuz, a guze eur galon hlaharet ha spontet-braz.

9. Hag o veza tremenet dioustu dre an oll zoriou, hi a chomas en he sav dirag ar roue, el leh ma oa azezet war e dron, gwisket gand e zillad roue, skeduz gand an aour ha gand ar vein talvouduz-braz, hag eñ spontuz da weloud.

10. P'en-doe-eñ savet e benn, e tiskouezas froudenn e galon e lugern e zaoulagad ; hag ar rouanez a fatas ; hag he dremm o veza deuet da veza drouglivet, e lezas he fenn da goueza war he flah.

11. Ha Doue a droas kalon ar roue, hag a habaskaas anezañ ; ha raktal e tilammas diwar e dron, hag eñ nehet, hag oh harpa anezi en e zivreh, ken na ziabafas, e likaoue anezi, o lavaroud :

12. Petra eh-eus-te, Ester ? Me eo da vreur ; n'az-pezh ket a aon.

13. Ne varvi ket : rag al lezenn-ze n'eo ket bet greet evidout, hogen evid ar re all oll.

14. Tosta eta ha stok ouz va gwelenn-roue.

15. Hag evel ma tave-hi, ar roue a gemeras e walenn-roue aour, hag e lakaas anezi war he gouzoug, hag e pokas dezi, hag e lavaras : Perag ne gomzez-te ket ?

16. Hag hi a lavaras : Da welet em-eus, aotrou, evel eun êl Doue, ha va halon a zo bet reustlet gand ar spont rag da hloar.

17. Rag estlammuz-braz out, Aotrou, ha da zremm a zo kaer-meurbed.

18. O komza evel-se, e fatas adarre, hag e oe dare dezi chom divuhez.

19. Hogen ar roue a oe strafuillet-braz, hag e oll vinistred a zihlahare anezi.

XVI. Pennad.

Lizer a gasas Artaksersez, e gounid ar Iuzevien, dre oll broviñsou e rouantelez.

1. Ar roue braz Artaksersez, pehini a ren adaleg an India betek an Etiopia, war seiz proviñs ha c'hweh-ugent, d'an dued ha d'ar briñsed a zo dindan or beli, salud.

2. Kalz a dud o wallober euz a vadelez ar briñsed, hag euz an enor o-deus greet dezo, a zeu d'en em rei d'ar balhder.

3. Ha n'eo ket a-walh dezo beza strivet da waska war ouizeien ar roueed, hogen ne hellont ket gouzañvi ar hloar a zo bet roet dezo, hag eh aozont spiou ouz ar re o-deus he roet dezo.

4. N'eo ket a-walh dezo dizanaoud ar mad a zo bet greet dezo, ha terri enno o-unan gwir an habaskted, hogen i a venn ivez e hellint tehoud diouz barn Doue pehini a wel pep tra.

5. O diboell a zav en heveleb doare ma lakaont o striv evid kolla gand o gevier hag o ijinou, ar re a zalh ervad ar harg a zo fiziet enno, hag a zellez beza meulet gand an oll e kement a reont,

6. O touella gand o zroidellerez skouarn vad ar briñsed, pere a zo douget anezo o-unan da ober stad euz ar re all.

7. Kement-se a gaver da wir en istoriou koz ; ha bemdez e weler c'hoaz penaoz plegou mad ar roueed a vez disterraet gand gwall-lavariou.

8. Rag se eo red lakaad ar peoh en oll broviñsou.

9. Ma hourhemennom traou disheñvel, ne dleit ket menna e teufe kement-se euz a skañvder or spered ; hogen penaoz e reom or hemennou evid talvoudegez an oll, hervez an disheñveldigez hag ar redi euz an amzeriou.

10. Hag evid ma poelloh sklêrroh ar pezh a leverom, ni or-boua degemeret mad etrezeg ennom Aman, mab Amadat, Masedoniad a galon hag a vroad, diavêziad e-keñver gwad ar Bersied, pehini eo bet fellet dezañ saotra or huñvezeg gand e grizder.

11. Ha goude ma on-eus roet dezañ eun arouez ker braz euz or grad-vad ma on-eus e halvet on tad, ha ma eo bet azeulet evel an eil goude ar roue ;

12. Eo bet savet da veza ken herr, ma eo bet strivet gantañ tenna diganeom ar rouantelez hag ar vuhez.

13. Rag lakaet en-doa en e benn, gand eur fallagriez nevez ha kerse, kas d'ar maro Mardoche, gand fealded ha mad-oberiou pehini e vevom, hag ivez Ester, or gwreg hag a ren ganeom hi hag he oll bobl.

14. Hag eñ a grede penaoz goude beza o lazet, hag ol lezet on-unan, e tegasje d'ar Vasedonied rouantelez ar Bersied.

15. Hogen ni on-eus anavezet penaoz ar Iuzevien pere a oa bet gouestlet d'ar maro gand ar fallagriez-se, n'o-doa greet droug ebed ; hogen penaoz en em renont gand lezennou reiz.

16. Ha penaoz int bugale an Doue uhel-braz, ollhalloudeg ha peurbaduz, dre drugarez pehini ar rouantelez-mañ a zo bet roet d'on tadou ha deom-ni, hag a zo miret bete-vremañ.

17. Rag se gouezit penaoz al liziri en-deus kaset en on ano a zo didalvez ;

18. Ha penaoz en abeg d'ar gwall-ze eo bet krouget e-harz porz kêr Suza, eñ hag e gerent ; Doue e-unan, ha nann ni, o veza roet dezañ ar pezh a oa dleet dezañ.

19. Hogen bezet staget en oll gêriou ar hemenn a gasom deoh hirio, evid ma hello ar Iuzevien miroud o lezennou.

20. Ha c'hwi a skoazello anezo, evid ma hellint laza ar re en em aoze evid rei ar maro dezo an trizegved deiz euz an daouzegved miz, anvet Adar.

21. Rag an Doue ollhalloudeg en-deus troet e levnez an deiz-se a gañv hag a zaerou.

22. Rag se e lakaot an deiz-se e-touez an deziou gouel, hag e lidot anezañ gand peb levnez, evid ma vezo gouezet en amzer-da-zond,

23. Penaoz ar re oll a zent ervad ouz ar Bersied, o-deus gober diouz o fealded ; ha penaoz ar re a zao a-eneb o rouantelez, a gav ar maro hervez o gwall.

24. Mar bez eur broviñs pe eur gêr bennag, ha na fello ket dezi en em rei d'al lid-se, ra vezo dismantret gand ar hleze, ha gand an tan, ha ra vezo kaset da get, en heveleb doare ma vezo dinesauz²⁴⁹ da viken, nann hepken d'an dud, hogen ivez d'al loened, evid skwer euz ar pezh a zo dleet d'ar re a zo disprizuz ha dizent.

²⁴⁹ dinesauz : ? di-nesa-uz (?)

LEVR JOB

I. Pennad

Doue a aotre d'an diaoul tempti Job..

1. Bez' e oa eun den e bro Hus, anvet Job ; hag an den-ze a oa eeun ha reiz ; hag eñ a zouje Doue, hag a dehe diouz an droug.
2. Ganet e oe dezañ seiz mab, ha teir merh.
3. Hag eñ en-doa en e gerz seiz mil dañvad, ha tri mil kañvad, ha pemp-kant koublad ejenned, ha pemp-kant azenez ; ha c'hoaz kalz a vevelou. Hag eñ a oa eun den brudet-braz e-touez re ar sav-heol.
4. Hag e vibien a yee, hag a ree banvez en o ziez, pep hini d'e zeiz, hag i a gase da di o hoarezed evid o fedí da zond da zebri ha da eva ganto.
5. Ha p'o-doa greet an deziou banvez-se pep hini d'e zeiz, Job a gase etrezeg enno, hag a zantele anezo ; hag o sevel diouz ar mintin, e kinnige sakrifisou-losk evid pep hini anezo. Rag eñ a lavare : Marteze o-deus pehet va mibien, ha n'o-deus ket benniget Doue en o halon. Evel-se e ree Job bemdez.
6. Eun deiz a oa e savas an êlez, mibien Doue, dirag an Aotrou, ha Satan a yeas ivez en o zouez.
7. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : A beleh e teuez-te ? Hag eñ a respontas hag a lavaras : Tro an douar em-eus greet, ha kerzet em-eus euz an eil penn d'egile anezañ.
8. Hogen an Aotrou a lavaras dezañ : Ha n'eh-eus-te ket sellet ouz Job, va zervijer, ouz pehini n'eus den ebed heñvel war an douar, den eeun ha reiz, hag a zouj Doue, hag a deh diouz an droug ?
9. Ha Satan a respontas hag a lavaras : Hag en aner e touj Doue Job ?
10. Ha n'eh-eus-te kaset tro-dro dezañ²⁵⁰, ha d'e di, ha d'e oll dra ? Ha n'eh-eus-te ket benniget oberiou e zaouarn, ha kement en-deus ha ne gresk ket war an douar ?
11. Hogen astenn eun nebeud da zorn, ha sko war kement a zo dezañ, hag e weli ma ne villigo ket ahanout dirazout.
12. Hag an Aotrou a lavaras da Zatan : Setu kement a zo dezañ a zo en da zorn ; hogen ne astenni ket da zorn warnezañ. Ha Satan a yeas kuit euz a-zirag an Aotrou.
13. Hogen eun deiz a oe, pa edo mibien ha merhed Job o tebri hag oh eva gwin e ti o breur hena,
14. E teuas eur hannad da gavoud Job, hag a lavaras dezañ : An ejenned a are, hag an azenezed a beure en o hichenn,
15. Hag ar Sabeed a zo en em strinket warnezo, hag o-deus o skrapet oll ; ar baotred o-deus lazet gand ar hleze, ha n'eus tehet nemedon evid e rei da anaoud dit.

²⁵⁰ kaset tro-dro dezañ : gwarezet pep tra

16. Pa gomze c'hoaz hemañ, e teuas eun all hag a lavaras : Tan Doue a zo kouezet euz an neñv, hag en-deus devet an deñved hag ar baotred, ha n'eus tehet nemedon evid e rei da anaoud dit.

17. Pa gomze c'hoaz hemañ, e teuas eun all hag a lavaras : Ar Haldeed o-deus greet teir bandenn, hag a zo en em daolet war ar hañvaled, hag o-deus o skrapet ; ar baotred o-deus ivez lazet gand ar hleze, ha n'eus tehet nemedon evid e rei da anaoud dit.

18. Pa gomze c'hoaz hemañ, e teuas eun all hag a lavaras : Pa edo da vibien ha da verhed o tebri hag oh eva gwin e ti o breur hena,

19. Eun avel kreñv-murbed a zo savet en eun taol euz an distro, hag en-deus skoet ouz pevar horn an ti, a zo bet diskaret, hag en-deus flastret da vugale, pere a zo maro ; ha n'eus tehet nemedon evid e rei da anaoud dit.

20. Neuze e savas Job, hag e rogas e zillad, ha goude beza touzet e benn, en em daolas d'an douar, hag eh azeulas,

21. Hag e lavaras : Noaz on deuet euz a gov va mamm, ha noaz e tistroin di²⁵¹ ; an Aotrou en-doa roet, an Aotrou en-deus tennet ; evel ma eo plijet gand an Aotrou, eo bet c'hoarvezet ; ra vezo benniget ano an Aotrou.

22. E kement-se ne behas ket Job gand e vuzellou, ha ne lavaras netra a zireiz a-eneb Doue.

II. Pennad.

Eur gouli braz a zav war gorv Job. E wreg a heskin anezañ.

1. Hogen eun deiz a oe e savas an êlez, mibien Doue, dirag an Aotrou, ha Satan a yeas ivez en o zouez, hag a zavas dirazañ.
2. Hag an Aotrou a lavaras dezañ : A beleh e teuez-te ? Hag eñ a respontas hag a lavaras : Tro an douar em-eus greet, ha kerzet em-eus euz an eil penn d'egile anezañ.
3. Hag an Aotrou a lavaras da Zatan : Ha n'eh-eus-te sellet ouz Job va zervijer, ouz pehini n'eus den heñvel war an douar, den eeun, ha reiz, hag a zouj Doue, hag a deh diouz an droug, hag a zo c'hoaz dinamm, petra bennag ma eh-eus va lakaet da zavel en e eneb, ha da hlahari anezañ en aner.
4. Ha Satan a respontas hag a lavaras : Krohenn evid krohenn ! ha kement en-deus greet an den, a roy evid e vuhez.
5. Hogen astenn da zorn, ha sko war e eskern ha war e gig, ha neuze e weli ma ne villigo ket ahanout dirazout.
6. Hag an Aotrou a lavaras da Zatan : Setu ema en da zorn ; hogen mir e vuhez dezañ
7. Ha Satan o veza eet kuit euz a-zirag an Aotrou, a lakaas da zavel war Job eur gouli ar gwsa, adaleg plantou e dreid beteg kern e benn :
8. Hag hemañ azezet war eur bern teil, a denn gand eun darbod al lin brein euz e houli.
9. Neuze e wreg a lavaras dezañ : Ha c'hoaz e chomez en da eeunder ? Millig Doue, ha marv.

²⁵¹ di : en douar.

10. Hogen eñ a lavaras dezi : Komza a rez evel eur vaouez diskiant. Ma on-eus degemeret ar mad euz a zorn Doue, perag ne zegemerfem ket ivez an droug ? E kement-se ne behas ket Job gand e vuzellou.
11. Hogen tri mignon da Job o veza klevet an oll zroug a oa c'hoarvezet gantañ, a zeuas pep hini euz e leh, Elifaz an Temaniad, ha Baldad ar Sichiad, ha Safar an Naamatiad. Rag en em glevet e oant evid dond kevred d'e weloud, ha d'e zihlahari.
12. Ha pa zavjont a-bell o daoulagad, ne anavezjont ket anezañ, hag en eur harmi en em lakajont da ouela ; hag o veza roget o dillad, e taoljont poultr en êr evid koueza war o fenn.
13. Hag i a chomas azezet ganatñ war an douar a-hed seiz devez ha seiz nozvez, hag hini ne lavaras ger outañ : Rag i a wele penaoz e hlahar a oa braz-meurbed.

III. Pennad.

Job a villig an deiz e pehini e oa ganet.

1. Goude-ze Job a zigoras e henou, hag a villigas an deiz ma oe ganet,
2. Hag a lavaras :
3. Ra'z ay da get an deiz e pehini on bet ganet, hag an noz e pehini eo bet lavaret : Engehentet eo bet eun den.
4. Ra vezo troet an deiz-se e teñvalijenn, na vezo ket mui sellet outañ gand an Aotrou euz an neh, ha na vezo ket sklêrret gand ar goulou.
5. Ra vezo teñvallaet gand an amhoulou, ha gand skeud ar maro, ra zeuy warnezañ eul latar, ha ra vezo kelhiet gand c'hwevder.
6. Ra vezo eur gorventenn deñval war an noz-se, na vezo ket lakaet e-touez deizioù ar bloaz, na niveret e-touez ar miziou.
7. Ra vezo an nozvez-se heh-unan, ha dizellezeg²⁵² a veuleudi.
8. Ra vezo milliget gand ar re a villig an deiz, gand ar re a zo dare da zegas Leviatan²⁵³.
9. Ha ra vezo teñvallaet ar stered gand e latar, ra hedo ar goulou ha n'her gwelo ket, kennebeud ha goulou deiz pa zav :
10. O veza n'he-deus serret dor ar hov en-deus va douget, ha n'he-deus ket distroet an droug diouz va daoulagad.
11. Perag n'on-me ket maro e kov va mamm, perag n'on-me ket tremenet kerkent ha ma on deuet er-mêz anezañ ?
12. Perag on-me bet degemeret war ar varlenn ? Perag on-me bet maget gand lêz an divronn ?
13. Rag bremañ e kouskfen sioul ; hag eh ehanfen em housk,`
14. Gand roueed ha kuzulierien an douar, pere a zav evito lehiou distro ;
15. Pe gand ar briñsed, pere o-deus aour, hag a laka leiz o zi a arhant :
16. Pe evel eur siohan kuzet na vijen ket beo, pe evel ar re a zo bet engehentet ha n'o-deus ket gwelet an deiz.

²⁵² dizellezeg : ar honrol euz "dellezeg"

²⁵³ Leviatan : eun euzvil a vev e-barz ar mor.

17. Eno eo o-deus ar re fallagr ehanet da ober trouz, eno eo o-deus ar re a zo skuiz arzavet gand o labour.

18. Eno ar re a zo bet chadennet kevred n'o-deus mui droug ebed, ha ne glevont mui mouez o heskiner.

19. Eno ema bihan ha braz ; hag ar sklav a zo dieubet diouz e vestr.

20. Perag eo bet roet ar goulou d'an den reuzeudig, hag ar vuhez d'ar re a zo e c'hwevder ar galon ?

21. Pere a hortoz ar maro ha na zeu ket, hag a zo evel pa doullfent evid klask eun teñzor ;

22. Ha pere a zo laouen-braz, pa o-deus kavet ar bez.

23. Perag eo bet roet ar goulou da eun den a zo kuzet e hent, hag en-deus Doue goloet a deñvalijenn ?

24. A-barz ma tebran eh huanadan ; ha va garmou a zo evel doureier dihlannet :

25. Rag ar pez a ree aon din a zo deuet din, hag ar pez a sponte ahanon a zo c'hoarvezet ganen.

26. Ha n'on-me ket bet sioul ? Ha n'on-me ket bet tavedeg ? Ha n'on-me ket bet habask ? Ha koulskoude eo kouezet ar froudou warnon.

IV. Pennad

Elifaz a damall Job diwar-benn e glemmou.

1. Neuze Elifaz, an Temaniad, a gomzas, hag a lavaras :

2. Mar deuom da gomza ouzit, e vezo marteze droug ganez ; hogen piou a hellfe derhel e lavar ?

3. Setu-te eh-eus desket²⁵⁴ meur a hini, hag eh-eus kre~vaet an daouarn skuiz :

4. Ar re a horelle o-deus skoazellet da lavariou²⁵⁵, hag an daoulin a grene eh-eus kreñvaet.

5. Hogen bremañ e kouez warnout ar gouli hag e tignalonekaez ; skoet out gantañ, hag out reustlet.

6. Peleh ema da zoujañs, da nerz, da habaskted, ha klokder da heñchou²⁵⁶ ?

7. Laka evez, me az ped, piou eo an den dinamm a zo bet kollet ? Pe peur eo bet kaset da get an dud reiz !

8. Ha ne welan-me kentoh penaoz ar re a ra fallagriez, a had an drougou, hag a ved anezo,

9. A zo diskaret gand c'hwezadenn Doue, ha dispennet gand korventenn e vuanegez :

10. Yuderez al leon, ha mouez al leonez a zo bet mouget, ha dent al leonedigou a zo bet brevet.

11. An tigr a zo maro, o veza n'en-doa ket a breiz, hag al leonedigou a zo bet kaset da get.

12. Koulskoude eur ger kuzet a zo bet lavaret din, ha va skouarn he-deus, evel e-tuoni²⁵⁷, degemeret an trouz anezañ.

²⁵⁴ desket : kelennet.

²⁵⁵ Ar re a horelle o-deus skoazellet da lavariou : da lavariou o-deus skoazellet ar re a horelle.

²⁵⁶ klokder da heñchou : da heñchou mad-tre. (da zoareou).

13. E euz gweledigez an noz, pa zeu an den da voredi kaleta²⁵⁸ gand ar housk,
 14. Ar spont hag ar hren a grogas ennon, hag an aon a redas dre va oll eskern.
 15. Ha pa'z eas eur spered e-biou din, e savet sonn va bleo em penn.
 16. Eun den a welis, ha ne anavezen ket anezañ, petra bennag ma oa dirag va daoulagad ; hag e klevis eur vouez evel eur c'hwez hwek.
 17. An den hag eñ a grede en em zidamalloud, oh en em hevelebekaad ouz Doue ; ha glannoh e vezo-eñ eged e grouer ?
 18. Ar re zoken a zervije anezañ n'int ket bet stard ; hag en e êlez en-deus kavet direiz.
 19. Pegement ouspenn ar re a chom e tier pri, pere o-deus eun diazez pri, a vezo krignet evel gand ar preñved ?
 20. Euz ar mintin d'ar pardaez e vezint dispennet ; hag o veza n'en-deus hini anezo a boell, ez aint da get da viken.
 21. Hogen ar re a zo chomet war o lerh, a vezo tennet diouto ; mervel a raint, ha ne varvint ket er furnez.

V. Pennad.

Elifaz a erbed Job da houlenñ skoazell Doue gand ar binijenn.

1. Galv eta, ma ez eus unan bennag hag a responto dit, ha tro ouz unan bennag euz ar zent.
 2. Evid gwir ar vuanegez a laz ar re ziboell, hag an erez a laz ar speredou bihan.
 3. Gwelet em-eus eun den diboell stard war e wriziu, ha raktal em-eus milliget e sked.
 4. E vibien a vezo pellaet diouz o dieub²⁵⁹, brevet e vezint e-tal ar porz, ha ne vezo den evid o zenna alese.
 5. An naoneg²⁶⁰ a zebro e ed, ar brezeliad a skrapo anezañ, hag ar zehedig²⁶¹ a evo e vadou.
 6. Netra ne hoarvez heb abeg er bed, hag ar hloaz ne zeu ket euz an douar.
 7. An den a zo ganet evid laboura, evel an evn evid nija.
 8. Rag se e pedin an Aotrou, hag e komzin ouz Doue,
 9. Pehini a ra traou braz ha dreist pep skiant, traou burzuduz ha dreist peb niver ;
 10. Pehini a ro glao war gorre an douar, hag a fenn an doureier dre ar bed oll ;
 11. Pehini a uhella ar re izellaet, hag a zihlahar ar re a oa en doan ;
 12. Pehini a gas da get mennoziou ar re fallagr, gand aon na hellje o daouarn peurober ar pez o-doa deraouet ;
 13. Pehini a douell ar re fur en o furnez o-unan, hag a ziskar mennoziou ar re fallagr.
 14. E-kreiz an deiz e kavint an deñvalijenn, ha da greisteiz ez aint a-dastorn evel da hanternoz.

²⁵⁷ e-tuoni : evidon-me nemetken.

²⁵⁸ kaleta : ar haleta.

²⁵⁹ o dieub o frankiz.

²⁶⁰ An naoneg : an hini naoneg.

²⁶¹ ar zehedig : an hini sehedig.

15. Hogen Doue a zieubo an ezommeg²⁶² euz a gleze o genou, hag ar paour euz a ziboell o daouarn.

16. Hag an ezommeg ne vezo ket dihed²⁶³, hag ar fallagriez a zerro he genou.

17. Gwenvidig eo an den a zo kastizet gand Doue. Na zistaol ket eta kastiz an Aotrou :

18. Rag eñ eo a hloaz, hag eñ eo a wella ; eñ eo a sko, hag e zorn a yaha.

19. Goude c’hweh enkrez e tieubo ahanout, hag er seizved an droug n’az tizo ket.

20. En naonegez az tenno euz ar maro, hag er brezel euz a daol ar hleze.

21. Diouz gwalenn an teod e vezi kuzet, ha mar deu ar reuz, n’az-pezo ket a aon razañ.

22. Er mantr hag en naonegez e c’hoarzi, ha n’az-pezo ket a aon rag loened an douar.

23. Hogen unvaniez a vezo etre te ha mein ar parkeier, ha loened an douar a vezo habask en da geñver.

24. Te a welo ar peh dindan da delt, hag oh emweloud da dud, ne behi ket.

25. Te a welo ivez da ouenn o paota ; ha da nested o kreski evel geot an douar.

26. Leun a vadou ez i er bez, evel eur bern ed a zo dastumet en e amzer.

27. Setu eo gwir ar pezh on-eus lavaret dit : Selaou eñ, hag eñvor anezañ.

VI. Pennad.

Job a rebech d’e vignoned ar gaou euz o zamall.

1. Hogen Job a respontas, hag a lavaras :

2. A-youl e vez lakaet en eur valañs ar pehejou dre bere em-eus dellezet buanegez Doue, hag ar boan a houzañvan.

3. Pounnerroh e vez ar re-mañ eged trêz ar mor ; rag se va geriou a zo leun a hlahar :

4. Rag saeziou an Aotrou a zo sanket ennon, o drougiez a hesk va spered, hag ar spont rag an Aotrou a stourm ouzin.

5. An azen gouez hag eñ a vreug pa en-deus geot ? Pe an ejenn hag eñ a vlej, mar dema dirag eul laouer leun ?

6. Ha bez’ e heller debri eun dra divlaz, ha n’eus ket a holen ennañ ? Ha bez’ e hell eur re tañva ar pezh a laka da vervel an hini a dañv anezañ ?

7. Ar pezh ne felle ket din steki outañ beteg kent, a zebran bremañ em anken.

8. Piou a lakay ma teuy din va goulenn, ha ma aotreo din Doue ar pezh a hedan ?

9. Evel ma en-deus deraouet, ra beurlavet ahanon ; ra lezo e zorn da vond, ha ra skejo ahanon.

10. Ha ra vezo an dizoan-ze din, er poaniou a bere e hlaharo ahanon, na enebin ket ouz lavariou an hini a zo santel.

11. Rag petra eo va nerz, evid ma hellin harza ? Pe petra eo va diwez, evid ma virin an habasketed ?

12. Va nerz n’eo ket nerz ar vein, ha va hig n’eo ket a arem.

²⁶² an ezommeg : an hini ezommeg.

²⁶³ ne vezo ket dihed : ne hedo, ne hortozo ket.

13. Setu n'em-eus skoazell ebed ennon va-unan, ha va mignoned o-unan a zo tehet diouzin.

14. An hini n'en-deus ket a druez ouz e vignon, en-deus kollet doujañs an Aotrou.

15. Va breudeur a zo tremenet e-biou din, evel eur froud a red buan en traoniennou.

16. Ar re o-deus aon rag ar reo, a vezo gwasket gand an erh.

17. En amzer e pehini en em lakaint da redeg, e teuint da get ; ha pa zeuy da veza tomm, e vezint distaget euz o leh²⁶⁴.

18. Troidelluz eo o raveñchou²⁶⁵ : war ar goullo e kerzont, hag e vezint kaset da get.

19. Likit evez ouz raveñchou Tema, hag ouz heñchou Saba, ha gortozit eun nebeud.

20. Mez o-deus, o veza ma em-eus gedet : deuet int koulskoude etrezeg ennon hag int bet goloet a vez.

21. Bremañ oh deuet ; ha kerkent ma hoh-eus gwelet va gouli, oh bet spontet.

22. Ha lavaret em-eus-me : Degasit, ha roit din lod euz ho madou.

23. Pe, dieubit ahanon euz a zorn va enebour, ha tennit ahanon euz a zorn ar re greñv.

24. Deskit²⁶⁶ ahanon, hag e tavin ; ha ma em-eus eun dra ha na ouzon ket, roit eñ da anaoud din,

25. Perag hoh-eus-hu drougkomzet diwar-benn lavariou ar wirionez, pa n'eus hini ahanoh a gement a hellfe va zamalloud ?

26. Ne strivit en ho lavariou nemed da glask tamallou, hag ho keriou a ya gand an avel.

27. En em deurel a rit war eun emzivad, ha c'hwi a laka ho striv da vrema ho mignon.

28. Hogen peurhrit ar pez hoh-eus deraouet ; roit skouarn din, ha gwelit ma lavaran gevier.

29. Respontit, me ho ped, heb dael ; hag en eur gomza, barnit hervez ar reiz.

30. Ha ne gavot ket a fallagriez war va zeod, nag a ziboell em genou.

VII. Pennad.

Job a laka dirag an Aotrou e reuz hag e zinerzded.

1. Buhez an den war an douar a zo eur brezel peurbaduz ; hag e zeiziu evel deiziu eur gopraer.

2. Evel ma youl eur sklav an disheol, hag evel ma hed ar gopraer diwez e labour ;

3. Evel-se em-eus bet miziu goullo, hag em-eus niveret nozveziou poaniuz.

4. Mar deuan da gouska, e lavaran : Peur e savin ? ha c'hoaz e hedan ar pardaez, hag e vezin leun a hlahar beteg an noz.

²⁶⁴ e vezint distaget euz o leh : ?

²⁶⁵ o raveñchou : o haravanou (?)

²⁶⁶ Deskit : Kelennit.

5. Va hig a zo goloet a vreinadurez ha gand eur poultr louz ; va hrohenn a zo dizehet ha roufennet.
6. Va deizioù a zo tremenet buannoh eged an neudenn a droh ar gwiader el lien ; hag i a zo eet e-biou heb ged ebed.
7. Az-pezh koun penaoz va buhez n'eo nemed eur hwezadenn, ha penaoz ne zistroy ket va lagad d'ar mad hiviziken.
8. Al lagad en-deus va gwelet n'am gwelo mui : da zaoulagad a zo deuet warnon, ha ne vezin mui.
9. Evel ma tremen eur goabrenn ha ma'z a da get : evel-se neb a ziskenno er bez ne bigno mui.
10. Ne zistroio mui d'e di, ha ne vezo mui anavezet el leh ma'z edo.
11. Rag se ne davin ket va genou, komza a rin e glahar va spered ; prezegi a rin e c'hwevder va ene.
12. Hag eur mor on-me, pe eur morvarh, ma eh-eus va zerret en eur vah ?
13. Ma lavararn : Va gwele am zilhaharo, hag o komza ennon va-unan e tiskuzin war va fled :
14. Te a sponto ahnaon gand huñvreou, hag a strafuillo ahanon gand geweledigeziou euzuz.
15. Rag se e ve gwelloc'h ar moug gand va spered, hag ar maro gand va eskern.
16. Ne hedan mui beva hiviziken : az-pezh truez ouzin, rag evel netra eo va deizioù.
17. Petra eo an den, evid ma teufes d'e uhellaad ? Ha perag e lakaez-te da galon warnezañ ?
18. Dond a rez d'e gavoud diouz ar mintin, ha raktal eh arnodez anezañ :
19. Beteg pegeid ne esperni-te ket ahanon, ha n'am lezi-te ket da lonka va halan ?
20. Pehet em-eus, petra a rin-me en da geñver, o ! mirer an dud ? Perag eh-eus-te va lakaet da enebour dit, hag on-me deuet da veza eur beh din va-unan ?
21. Perag ne dennez-te ket va fehed, ha perag ne lamez-te ket va fallagriez ? Setu a-barz nebeud e kouskin er poultr ; ha mar klaskez ahanon diouz ar beure, ne vezin mui.

VIII. Pennad.

Baldad a damall Job, hag a ziskouez dezañ e hlahar da gastiz.

1. Neuze Baldad, ar Suhiad, a respontas hag a lavararn :
2. Beteg pegeid e komzi-te evel-se, hag e vezo gerioù da henou evel eun avel greñv ?
3. Ha Doue a falla e varn. Ha diskara a ra an Ollhalloudeg ar pezh a zo reiz ?
4. Petra bennag ma o-deus pehet da vibien en e eneb, ha ma en-deus o dilezet en abeg d'o fallagriez ;
5. Koulskoude ma savez diouz ar mintin etrezeg Doue, ha mar pedez an Ollhalloudeg ;
6. Mar kerzez er hlanted hag er reizded, e tihuno raktal, hag ez ay etrezeg ennout, hag e lakay ar peoh en da di reiz :
7. En heveleb doare, mar deo bet dister da weloud da stad kenta, da stad diweza a vezo braz-meurbed.

8. Rag goulenn ouz ar rummou kent, hag enklask gand preder e eñvor on tadou.
9. (Rag abaoe deh om ganet, ha ne ouzom netra, o veza ma tremen on deiziou evel eur skeud war an douar).
10. Hag i a zesko ahanout : komza a raint ouzit, hag e tisklêriint dit mennoziou o halon.
11. Ha bez' e hell glazvezi ar broenn heb glebor ? Pe sevel an hesk heb dour ?
12. Pa emaint c'hoaz en o bleun, heb ma lakaer an dour warnezo, e tizehont kentoh eged ar geot all.
13. Evel-se ema heñchou ar re a ankounac'ha Doue, ha ged an orbidour a yelo da get.
14. E ziboell a zisplijo dezañ e-unan, hag e fiziañs a vezo evel eur gwiad kevnid.
15. En em harpa a ray war e di, ha ne vezo ket stard ; e skora a ray, ha ne chomo ket en e zav.
16. Doare e-leiz en-deus a-barz ma teu an heol, ha kerkent ha ma sav, e teu e gellid er-mêz.
17. En eur bern mein e kresk e wriziou, hag e-touez ar bili en em stardont.
18. Ma e ziwriзенner euz e leh, hemañ a zinaho anezañ, hag a lavaro : N'az anavezan ket.
19. Levenez e hent eo ma savo c'hoaz re all euz an douar.
20. Doue ne zistaolo ket an den eeun, ha ne astenno ket e zorn d'ar re fallagr.
21. Ken na vezo da henou leun a hoarz, ha da vuzellou leun a levenez.
22. Ar re a gasae ahanout a vezo goloet a vez ; ha telt ar re fallagr a vezo diskaret.

IX. Pennad.

Job a anavez galloud Doue. En em uvellaad a ra dirazañ.

1. Ha Job a respontas hag a lavaras :
2. Gouzoud a ran ervad penaoz eo gwir kement-se, ha penaoz n'eo ket reiz an den, ma hen hevelebkaer ouz Doue.
3. Mar fell dezañ striva outañ, ne hello ket responta eur wech war mil.
4. Fur eo a galon, ha galloudeg a nerz : piou en-deus enebet outañ, hag a zo chomet e peoh ?
5. Eñ eo a zoug ar menezioù, hag ar re a ziskar en e froudenn n'her gouzont ket.
6. Eñ eo a fiñv an douar euz al leh m'ema, hag a laka e bostou da grenna.
7. Eñ eo a hourhemenn d'an heol, hag an heol ne zav ket, ar stered a guz evel dindan ar ziell.
8. Eñ eo e-unan en-deus displeget an neñvou, hag a vale war koummou ar mor.
9. Eñ eo en-deus greet stered Arkturus, hag Orion, hag an Hiader, hag ar re a zo kuzet etrezeg ar hreisteiz.
10. Eñ eo a ra traou braz, traou a zo en tu all d'or spered, traou burzuduz, hag a zo diniver.

11. Mar deu etrezeg ennon, n'her gwelin ket ; mar pella diouzin, n'her gouezin ket.
12. Mar gra goulennou en eun taol, piou a responto outañ ? Pe piou a hello lavaroud : Perag e rez-te evel-se ?
13. Doue eo, ha den ne hell enebi ouz e vuanegez ; hag ar re a zoug ar bed a bleg dindannañ.
14. Petra on-me eta evid responta outañ, hag evid komza outañ ?
15. Ha pa ve ennon eun dra bennag a reiz, ne respontfen ket ; hogen e bedi a rafen evel va barner.
16. Ha pa en-defe selaouet ouz va fedenn, ne gredfen ket en-defe klevet va mouez.
17. Hag eñ a vrevo ahanon gand eur gorventenn, hag e kresko va gouliou heb ma ouezin zoken an abeg.
18. N'am-lez ket da denna va alan ; ha va harga a ra a hwevder.
19. Mar klasker ar galloud en e eneb, Ollhalloudeg eo ; mar klasker reizder ar varn, den ne gredfe testenia evidon.
20. Mar fell din en em zidamalloud, va genou a damallo ahanon ; mar fell din en em ziskoueza dinamm, eñ a roy da wir penaoz on tamalluz.
21. Ha pa ven eun den eeun, va ene n'e ouezje ket ; ha gand va buhez zoken e vijen inouet.
22. Eun dra n'em-eus ket lavaret ken : Doue a hlahar an den reiz evel an hini direiz.
23. Mar skourjez, ra lazo eur wech, ha na hoarzet ket euz a boaniou ar re zinamm.
24. An douar a zo lakaet etre daouarn an den fallagr, pehini a holo dremm e varnerien ; ma n'eo ket eñ, piou eta eo ?
25. Va deizioù a zo eet e-biou buannoh eged eur reder ; tehet int, ha n'o-deus ket gwelet ar mad.
26. Tremenet int evel listri leun a avalou²⁶⁷, evel eun naer en em daol war e breiz.
27. Ma lavaran : Biken ne gomzin evel-se ; va dremm a droan, ha gand ar boan on glaharet.
28. Me a grene e kement a reen, o houzoud²⁶⁸ penaoz ne espernez ket an hini a beh.
29. Goude-ze mar don eur fallagr, perag em-eus-me labouret en aner ?
30. Ha pa ven bet gwalhet e dour erh, ha pa luhfe va daouarn gand ar hlanded ;
31. Koulskoude e tiskouezfes ahanon evel pa ven goloet a zaotr ; ha va dillad a argarzo ahanon.
32. Rag n'eo ket ouz eun den heñvel ouzin e respontin, hag e vezin selaouet dirag ar barner evel dirag va far.
33. N'eus hini a gement a hellje on tamalloud on-daou, ha lakaad e zorn etrezom.
34. Ra denno e walenn diwarnon, ha na zeuet ket e spont da ober euz din.
35. Neuze e komzin, ha n'am-bezo ket a aon dirazañ : rag endra ma'z on er spont, ne hellan lavaroud ger ebed.

²⁶⁷ listri leun a avalou : Iskiz. Er skridid galleg e lenner : listri greet e broenn.

²⁶⁸ o houzoud : fazi bet greet a-viskoaz dre ar galleg.

X. Pennad.

Job a glemm ouz Doue. En em uvellaad a ra dirazañ.

1. Gand va buhez eo inouet va ene, en em rei a rin d'ar hlemmou en eneb va-unan, komza a rin e c'hwevder va ene.
2. Me a lavaro da Zoue : Na damall ket ahanon ; ro da anaoud din perag e varnez ahanon evel-se ?
3. Ha mad e kavjes e ve drougkomzet diwar va fenn hag e ven gwasket, me labour da zaouarn ; ha skoazia a rafes kuzul ar re fallag ?
4. Ha daoulagad kig eh-eus-te : pe ha te a wel evel ma wel eun den ?
5. Hag heñvel eo da zeiziu ouz deiziu eun den, ha da vloaveziou heñvel ouz e vloaveziou ;
6. Evid ma klaski va fallagriez, ha ma enklaski va fehed ?
7. Hag evid ma ouezi penaoz n'em-eus greet fallagriez ebed, pa n'eus den a gement a hellfe va zenna euz da zaouarn.
8. Da zaouarn eo o-deus va greet, hag o-deus va doareet e bep tu : ha te a fellfe dit va has da get en eun dro ?
9. Az-pezh koun, me az-ped penaoz eh-eus va greet evel eul lestr pri, ha penaoz em likii da drei e poultr.
10. Ha n'eh-eus-te ket va greet evel lêz livriz, ha n'eh-eus-te ket va lakaet da galedi evel lêz kaoulet ?
11. Gand krohenn ha gand kig eh-eus va gwasket ; gand eskern ha gand nervennou eh-eus va frammet :
12. Ar vuhez hag an drugarez eh-eus roet din, ha da emwel en-deus miret va spered.
13. Petra bennag ma kuzez kement-se en da galon, me a oar koulskoude penaoz eh-eus koun euz a bep tra.
14. Ma em-eus pehet, ha ma eh-eus va espernet kerkent, perag ne fell ket dit e ven bremañ glannaet euz va fallagriez ?
15. Ma on bet fallagr, gwa me ; ha mar don gwirion, ne zavin ket va fenn, o veza ma on leun a hlahar hag a reuz.
16. Kregi a ri ennon evel eul leonez, en abeg d'am balhder, hag e tistroi da heskina ahanon en eur gwall zoare.
17. Lakaad a rez da destou da zevel em eneb, hag e kreskez da vuaneged warnon, hag ar poaniou a gouez warnon evel eun arme.
18. Perag eh-eus-te va zennet euz a gov va mamm ? A-youl e ven eet da get, ha ne ven bet gwelet gand lagad ebed.
19. Bet e vijen evel pa ne vijen ket bet, degaset euz a gov va mamm d'ar bez.
20. An nebeud a zeiziu a chom ganen ha na dremenint ket a-barz nemeur ? Va lez eta, evid ma klemmin eun nebeud em glahar,
21. A-barz ma'z in heb distro en douar teñval, goloet gand disgwel ar maro ;
22. Douar reuz hag a deñvalijenn, e pehini e chom skeud ar maro, hag eun euz peurbaduz, heb reiz ebed.

XI. Pennad.

Sofar a gunuh Job e gaou.

1. Hogen Sofar, an Naamaliad, a respontas hag a lavaras :
2. An hini a lavar kement a drao, ha ne zelaouo ket ? Hag al labenner a vezo didamallet ?
3. Ha dirazout hepken a tavo an dud oll ? Ha pa ez-pezo greet goap euz ar re all, ha ne vezo hini a gement a faezo ahanout ?
4. Rag lavaret eh-eus : Glan eo va lavar, ha dinamm on dirazout.
5. Hag a-youl ma komzje Doue ouzit, ha ma tigorfe e henou dirazout :
6. Evid diskoueza dit ar pezh a zo kuzet en e furnez hag an niver braz euz e lezennou ; hag e teufes da boella penaoz e houlenne nebeutoh diganez eged na zellez da fallagriez.
7. Felloud a ra dit marteze anaoud kammejou Doue ha c'hwilia beteg klokter an Ollhalloudeg ?
8. Uhelloh eo eged an neñv, penaoz e ri-te ? Donnoh eo eged an ivern, penaoz e helli e anaoud ?
9. E vent a zo brasoh eged an douar, ha ledannoh eged ar mor.
10. Mar diskar pep tra, pe mar kemmesk kevred pep tra, piou a enebo outañ ?
11. Hag eñ a anavez gwander an dud ; hag o weloud o fallagriez, ha ne zell-eñ ket piz outi ?
12. An den gwan a zav beteg ar balhder, hag eñ a gred eo ganet frank evel eun azenig gouez.
13. Hogen te eh-eus kaledet da galon, hag eh-eus astennet da zaouarn etrezeg eñ.
14. Mar pellaer diouzit ar fallagriez a zo en da zorn, ha ma ne chom ket an direiz en da delt ;
15. Neuze e helli sevel da benn heb namm, hag e vezi stard, ha n'az-pezo ket a aon.
16. Da reuz zoken a ankounac'hai, ha n'az-pezo koun anezañ nemed evel euz an dour a'z a e-biou.
17. Ha da vuhez en he fardaez a zavo evel sked ar hreisteiz : ha pa vezi kollet war da veno, neuze e savi evel eur werelaouenn.
18. An esperañs a vezo roet dit az kargo a fiziañs : eur hleuz a ri hag e kouski e peoh.
19. Chom a ri e peoh, ha den ebed ne drubuillo ahanout ; ha kalz a dud az-pezo da zelloud a-druez outo.
20. Hogen daoulagad ar re fallagr a fallao, hag i a vezo dispennet heb ma hellint tehoud ; hag ar pezh a hedent a vezo argarzet gand o ene.

XII. Pennad.

Job a ziskouez furnez ha galloud Doue en e oberiou.

1. Hogen Job a respontas hag a lavaras :
2. N'eus eta a dud nemedoh, hag ar furnez a varvo ganeoh ?
3. Skiant vad em-eus kerkoulz ha c'hwil, ha n'on ket disterroh egedoh : rag piou eo an hini ha na oar ket ar pezh a ouzoh ?

4. An hini a zo goapaet gand e vignon eveldon a bedo Doue, ha Doue a zelaouo outañ ;: rag goap a reer euz a eeunder an den gwirion.
5. Eur hleuzeur eo hag a zo disprizet gand ar re binvidig, hag a zo aozet evid ar pred merket.
6. Tiez al laeron a zo leun, hag i a zav ouz Doue gand herrder, petra bennag ma eo eñ en-deus lakaet pep tra etre o daouarn.
7. Komz ouz al leoned, hag e teskint ahanout : hag ouz evned an neñv, hag e kentelliit ahanout.
8. Komz ouz an douar, hag e responto dit : ha pesked ar mor hen danevello dit.
9. Piou ha na oar ket penaoz eo dorn an Aotrou en-deus greet kement-se ?
10. En e zorn ema ene kement hini a zo beo, ha kement spered a zo e kig an dud.
11. Ar skouarn hag hi na varn ket al lavariou, hag ar staon a vlaz ?
12. Er re goz ema ar furnez, hag en amzer hir ar poell.
13. Ar furnez hag an nerz a zo e Doue ; eñ en-deus ar huzul hag ar skiant-vad.
14. Mar diskar, den ne hello sevel ; mar serr kloz eun den, ne vezo hini evid digeri dezañ.
15. Mar dalh an doureier, pep tra a vezo dizehet ; ma laosk anezo, e tispennint an douar.
16. An nerz hag ar furnez a zo ennañ : eñ a anavez an toueller hag an den touellet.
17. Ar guzulieren a gas en eur gwall ziwez, hag ar varnerien en abafder.
18. Ar gouriz-kleze a denn d'ar roueed, hag e laka eur gordenn war-dro d'o dargreiz.
19. Ar veleien a gas heb gloar, hag e tiskar ar re vraz.
20. Trei a ra lavar ar re wirion, hag e tenn o gouiziegez digand ar re goz.
21. Skuilla a ra ar vezegez war ar briñsed, hag e sav a-nevez ar re a zo bet gwasket.
22. Diskoueza a ra ar pezh a zo kuzet don en deñvalijenn, hag e tegas d'ar goulou skeud ar maro.
23. Kreski a ra e niver ar broadou, hag e koll anezo ; ha goude beza o dispennet, o degas adarre evel ma oant.
24. Trei a ra kalon priñsed an douar, hag e touell anezo oh o lakaad da gerzoud dre vroioù heb hent.
25. Pafala a raint e-kreiz an deñvalijenn heb goulou, hag e lakay anezo da horella evel tud a zo mezo.

XIII. Pennad.

Job a ra e glemmou da Zoue.

1. Setu va lagad en-deus gwelet an traou-ze oll, ha va skouarn he-deus o hlevet, hag o foellet em-eus oll ;
2. Ar pezh a ouzoh a anavezan ivez, ha n'on ket disteroh egedoh.
3. Koulskoude ouz an Ollhalloudeg e fell din komza, ha striva ouz Doue em-eus c'hoant ;

4. Goude beza diskouezet a-raog penaoz ez oh oberourien gevier, hag heulierien gwall gelennou.
5. Hag a-youl e tavejeh, evid ma veh kemeret evid tud fur.
6. Selaouit eta va zamall, ha likit evez ouz barn va muzellou.
7. Ha Doue en-deus ezomm euz ho kevier, evid ma teufeh d'e zivenni gand geriou touelluz ?
8. Ha c'hwi a fell deoh skoazia Doue gand ho kalloud, ha c'hwi a laka ho striv d'e zidamalloud ?
9. Ha kement-se a hell heta dezañ, ken oh pehini na hell netra beza kuzet ? Pe touellet e vezo-eñ evel eun den, gand ho troidellou ?
10. Eñ e-unan ho tamallo, o veza ma eo fellet deoh e skoazia en disgwel.
11. Kerkent ha ma fiñvo, e saouzano ahanoh, hag ar spont anezañ en em daolo warnoh.
12. Ar houn ahanoh a vezo heñvel ouz al ludu, hag ho pennou a vo troet e fank.
13. Tavit eun nebeud, evid ma livirin kement ha ma alio va spered din.
14. Perag e tuframman-me va hig gand va dent, hag e tougan-me va ene etre va daouarn ?
15. Ha pa lazfe Doue ahanon, e lakafen va ged ennañ ; ha koulskoude e tamallfen va heñchou dirazañ.
16. Hag eñ a vezo da Zalver din : rag pilpouz ar bed ne zeuy ket dirazañ.
17. Selaouit va frezeg,ha digorit ho tiskouarn d'am lavariou goloet.
18. Ma ven barnet, me a oar e ven kavet dinamm.
19. Piou eo an hini a fell dezañ beza barnet ganen ? Deuet. Perag e ven-me bevezet dilavar ?
20. Daou dra ne houlennan ken diganez, ha goude-ze ne guzin ket a-zirazout.
21. Pella da zorn diwarnon, ha na spont ket ahanon gand da euz.
22. Galv ahanon, ha me a responto dit ; pe me a gomzo, pe te a responto din.
23. Ped fallagriez ha ped pehed em-eus-me greet ? Diskouez din va gwallou ha va faziou.
24. Perag e kuzez-te da zremm, hag e sellez-te ouzin evel da enebour ?
25. Da halloud a ziskouezez a-eneb eun delienn a zo kaset gand an avel, war-lerh eur goloenn zeh ez ez.
26. Rag traou c'hwero a skrivez em eneb, hag e fell dit va evezi en abeg da behejou va yaouankiz.
27. Er hefiou eh-eus lakaet va zreid, ha va oll wenodennoù eh-eus arvestet, hag eh-eus sellet piz ouz roudou va zreid.
28. Me pehini a dle beza bevezet evel eun dra vreïn, hag a dle dond da veza heñvel ouz dillad debret gand an tartouzed.

XIV. Pennad.

Peger berr ha peger reuzeudig eo buhez eun den war an douar.

1. An den ganet gand ar wreg a vev nebeud a amzer, hag a zo leun a reuziou.
2. Sevel a ra evel eur vleuñvenn, hag a zo flastret dindan an treid kerkent ha ma vez digor ; tehoud a ra evel eur skeud, ha ne chom morse en eun heveleb stad.

3. Ha te a euter²⁶⁹ digeri da zaoulagad warnezañ, hag e lakaad e barn ganez ?
4. Piou a hell lakaad glan an hini a zo ganet euz a eur ouenn dihlann ? Ha n'eo te ket hepken a hell e ober ?
5. Deizioù an den a zo berr ; niver e vizioù a zo etre da zaouarn ; harzou e vuhez eh-eus merket, ha ne hell ket mond en tu all.
6. Pella eun nebeud dioutañ, beteg ma kavo, evel eur gopraer, an diwez euz e boaniou.
7. Ged he-deus ar wezenn : mar bez trohet, e glazvez c'hoaz, hag he skourrou a-vann adarre.
8. Ha pa ve kosaet he gwrizienn en douar, ha pa ve maro he hef er poultr,
9. Diouz c'hwez an dour e vano, hag hi en em holoy a zeliou, evel pa eo bet plantet kent.
10. Hogen an den pa eo maro, pa eo digiget ha bevezet, peleh ema, me az ped ?
11. Evel ma teu an doureier d'en em denna euz ar mor, ha ma teu eur ster houllou da zizeha :
12. Evel-se an den pa eo kousket, na adsavo ket, ken na vezo bevezet an neñv ; ne zihuno ket, ha ne zavo ket euz e gousk.
13. Piou a aotreo din kement-se, ma warezi ahanon, ha ma'z kuzi en ivernou, ken na vezo eet da froudenn e-biou, ha n'az-pezo merket eun amzer din, e pehini ez-pezo koun ahanon ?
14. Ha te a venn penaoz pa eo maro eun den, e hellfe c'hoaz beva ? En oll reizioù e pere e stourman bremañ, e hedan ken na zeuy va hemm.
15. Va gervel a ri, ha me a responto dit ; da labour da zaouarn eh astenni da zorn²⁷⁰.
16. Niveret eh-eus va hammejou : hogen distaol din va fehejou.
17. Va gwallou eh-eus merket evel en eur zah ; hogen va fallagriez eh-eus pareet.
18. Eur menez a gouez, hag a zo kaset da get ; hag eur roh a zo tennet euz e leh.
19. An doureier a doull ar vein, hag an douar a zo gwastet a nebeud a nebeud gand an dihlann : evel-se e kollez an den.
20. E greñvaet eh-eus evid eun nebeud amzer, evid ma tremenje da viken ; nevezi a ri e zremm, hag e kasi anezañ er-mêz.
21. Pe e vezo da vibien er hloar, pe e vezint en dismegañs, n'her gouezo ket.
22. Koulskoude e gig, keit ha ma vevo, a vezo glaharet, hag e ene e-unan a ouelo warnezañ.

XV. Pennad.

Elifaz a lavar penaoz ar re fallagra zo gloazet bepred er bed-mañ.

1. Hogen Elifaz, an Tremaniad, a respontas hag a lavaras :
2. An den fur hag eñ a dle responta evel pa gomzje ouz an avel, ha leunia e galon a wrez ?

²⁶⁹ euter : a deurvez.

²⁷⁰ da labour da zaouarn eh astenni da zorn : dizeria a ri goude labour da zaouarn.

3. Tamalloud a rez gand da heriou an hini n'eo ket heñvel dit ; hag e komzez en eun doare dizeread.
4. Kement ha ma hellez, eh-eus kaset da get doujañs Doue, hag eh-eus pellaet ar pedennou a reed dirazañ.
5. Rag da fallagriez he-deus desket²⁷¹ da henou, ha te a heuill teod touerien-Doue.
6. Da henou eo a damallo ahanout, ha n'eo ket me ; ha da vuzellou a responto dit.
7. Ha te eo ar henta den a zo bet krouet, ha greet out bet a-barz²⁷² ar hrehiou ?
8. Ha kuzul Doue eh-eus selaouet hag e furnez a vezo disterroh eged da hini ?
9. Petra a ouzout-te, ha na ouzom ket ? Petar a boellez, ha na boellom ket ?
10. En on touez ez eus tud koz hag hirhoalet, ha kosoh eged da dadou.
11. Ha diêz e ve da Zoue da zihlahari ? Hogen da wall heriou a vir outañ.
12. Perag e sav da galon, hag evel pa vennfes traou braz ; perag ef-eñ²⁷³ balh da lagad ?
13. Perag e stambouh da spered ouz Doue, ma tennez euz da henou geriou en doare-ze ?
14. Petra eo an den, evid beza dinamm, hag evid beza reiz, pa eo ganet gand ar wreg ?
15. Setu e-touez e zent n'eus hini didrouz, hag an neñvou n'int ket glan dirazañ.
16. Pegen argarzusoh, ha peger gwannoh eo an den, eñ pehini a ev ar fallagriez evel an dour.
17. E ziskoueza a rin dit, selaou ahanon ; ar pezh em-eus gwelet a zanevellin dit.
18. Ar re fur a embann ar pezh a ouzont, ha ne guzont ket lavar o zadou.
19. Da bere eo bet roet an douar-mañ, hag e-touez pere n'eo bet tremenet diavêziad ebed.
20. Rogoni an den fallagr a gresk a zeiz e deiz, hag arvaruz eo an niver euz a vloaveziou e zireizded.
21. Trouz ar spont a zo bepred en e skouarn ; ha pa ema e peoh, en-deus aon bepred rag ar spiou.
22. Ne gred ket e hellfe distrei euz an deñvalijenn d'ar goulou, ha ne wel tro-war-dro nemed klezeier.
23. Pa fiñv evid klask bara, eh anavez penaoz deiz an deñvalijenn a zo dare da goueza warnezañ.
24. An enkreuz a spont anezañ, hag ar reuz a hronn anezañ, evel eur roue a zo dare d'ar stourm.
25. Rag astennet en-deus e zorn a-eneb Doue ; hag en em nerzet eo a-eneb an Ollhalloudeg.
26. O sevel e benn en-deus redet en e eneb, ha gand eun direnn²⁷⁴ deo eo en em armet.
27. Al lard en-deus goloet e zremm, hag an druzoni a red a bep tu anezañ.
28. Chomet eo e kêriou dismantret, e tiez didud, a zo deuet da veza evel berniou mein.

²⁷¹ desket : kelennet.

²⁷² a-barz : a-raog.

²⁷³ ef-eñ : ez eo

²⁷⁴ eun direnn : eur skoed.

29. Ne binvidikay ket, hag e vadou ne badint ket, ha ne astenno ket e wrizienn en douar.

30. N'en em denno ket euz an deñvalijenn ; ar flamm a zevo e skourrou ; hag eñ a vezo diskaret gand ar c'hwez euz e henou.

31. Ne gredo ket, en e douellerez, penaoz e hell beza dasprenet gand eur gobr bennag.

32. A-barz ma vezo peurhreet e zeziou, e vezo kollet ; hag e zaouarn a zizeho.

33. Evel eur winienn vouk en he henta bleun hag evel eur wezenn olived a daol he bleun, e weñvo.

34. Rag difrouez eo kement a zastum an den pilpouz, hag an tan a zevo tiez ar re a zegemer roou a galon vad.

35. Engehenta a ra ar hlahar, ha genel a ra ar fallagriez, hag e galon a glask touellou nevez.

XVI. Pennad.

Job en em glemm euz a grizder e vignoned.

1. Hogen Job a respontas hag a lavaras :

2. Kement-se em-eus klevet aliez ; dihlaherien rehuz oh oll.

3. Ha n'o-devezo ket a ziwez ar geriou aveleg-se ? Ha red eo dit komza ken dichek ?

4. Me a hellfe ivez komza evelдох ; hag a-youl e ve hoh ene evel va ene :

5. Ho tihlarhari a rajen ivez gand va geriou, hag heja a rafen va fenn warnoh :

6. Ho kreñvaad a rajen gand va geriou, hag e fiñvjen va muzellou evid ma veh espernet.

7. Hogen petra a rin ? Mar komzan, na habaskay ket va glahar ; ha mar tavan, ne bellay ket diouzin.

8. Va glahar a wask ahanon bremañ, ha va oll izili a zo deuet da netra.

9. Va gwriziou a zo da desteni em eneb, hag eun den gand e hevier a zav em eneb evid enebi dirazon.

10. Strollet en-deus e oll froudenn ouzin, hag o hourdrouz ahanon, en-deus skrignet e zent ; va enebour en-deus sellet ouzin gand daoulagad euzuz.

11. Digoret o-deus o genou em eneb, hag oh ober goap ahanon, o-deus va garvanatet²⁷⁵ : en em walhet o-deus gand va foaniou.

12. Va zerret en-deus Doue dindan galloud an hini direiz ; va lakaet en-deus etre daouarn ar re fallagr.

13. Me pehini a oa pinvidig kent, me 'zo bet brevet en eun taol : lakaet en-deus va gouzoug da blega, va zorret en-deus, hag evel eur merk evid e wareg en-deus lakaet ahanon.

14. E hoafiou en-deus lakaet war-dro din ; va digroazell en-deus gloazet ; n'en-deus ket va espernet, ha skignet en-deus va bouzellou war an douar.

15. Gouli war gouli en-deus lakaet da zevel warnon, en em daolet eo warnon evel eul langouineg.

16. Eur zah em-eus gwriet war va hrohenn, ha va hig em-eus goloet a ludu.

²⁷⁵ garvanatet : savet gand Gonideg diwar ar ger "garo".

17. Va dremm a zo gweñvet gand an daerou, ha krohenn va daoulagad a zo en deñvalijenn.

18. Kement-se em-eus gouzañvet, heb ma ve saotret va dorn gand ar fallagriez, ha pa ginnigen da Zoue va fedenn hlan.

19. O ! douar, na holo ket va gwad, ha na gavo ket va garm leh ebed evid en em guza ennout.

20. Rag setu ema va zest en neñv, ha va huzulier el leh uhel.

21. Teodeien eo va mignoned : va lagad a ouel druz etrezeg Doue.

22. A-youl ne hellfe eun den en em zidamalloud dirag Doue evel ma hell en em zidamalloud dirag eun den eveltañ.

23. Rag setu eo berr va bloaveziou, hag e tremenont buan, hag e vaelan en eur ravent, dre behini ne dremenin mui.

XVII. Pennad.

Job a bed e vignoned da zistrei dezo o-unan.

1. Skuiz eo va spered, berreet eo va deiziou, hag ar bez hepken a chom din.

2. N'em-eus ket pehet, ha va lagad a chom er c'hwevder.

3. Dieub ahanon, o ! Aotrou, ha laka ahanon en da gichenn ; ha stourmet ouzin dorn neb a garo.

4. Pellaet eh-eus ar skiant euz o halon, rag-se ne vezint ket uehellaet.

5. Gouestla a ra ar preiz d'e genvreudeur, ha daoulagad e vibien a fato.

6. Va lakaet en-deus evel sorhenn ar bobl, ha skwer on deuet dirazo.

7. An droug a laka va lagad da deñvallaad, ha va izili a zo deuet da netra.

8. An dud reiz a vezo strafuillet gand kement-se, hag an den dinamm a zavo a-eneb ar pilpouz²⁷⁶.

9. An den reiz a zalho e hent, hag an hini a zo glan e zaouarn a vezo kreñvoh a ze.

10. Distroit eta oll, ha deuit, ha ne gavin den fur ebed en ho touez.

11. Va deiziou a zo eet e-biou, va mennoziou a zo bevezet, goude ma o-deus boureviet va halon.

12. An noz o-deus troet e deiz, ha goude an deñvalijenn e hedan c'hoaz ar goulou.

13. Mar gortozan c'hoaz, ar bez a vezo va zi, hag aozet em-eus va gwele en deñvalijenn.

14. D'ar vreïnadurez em-eus lavaret : Te eo va zad ; ha d'ar preñved : C'hwi eo va mamm, ha va hoar.

15. Rag peleh ema bremañ va ged , ha piou a lakay evez ouz va hir hortozidigez ?

16. Kement em-eus a ziskenno e goueled ar bez ; ha te a gred da vihanna em-bezo eno an ehan ?

XVIII. Pennad.

²⁷⁶ ar pilpouz : an hini pilpouz.

Baldad a damall Job euz a zihed²⁷⁷ hag euz a zihabasketed.

1. Hogen Baldad, ar Suhiad, a respontas, hag a lavaras :
2. Beteg pegeid e komzot-hu evel-se ? Poellit da genta, ha goude-ze e komzim.
3. Perag e sellit-hu ahanom evel leoned, hag om-ni tud displeet dirazoh ?
4. Mar kollez da ene en da froudenn, ha dilezet e vezo an douar en abeg dit, ha dezouget e vezo ar reier euz al leh ma'z int ?
5. Ha ne vezo ket mouget goulou ar fallagr, ha ne vezo ket dilugern flamm e dan ?
6. Ar goulou a oa en da delt a deñvally, hag ar hleuzeur a luhe a-zioh dezañ a vezo mouget.
7. Kammejou e nerz a vezo strizet, hag e guzul hel lakay da goueza.
8. Rag lakaet en-deus e dreid er rouejou, hag en o maillou e vale.
9. E droad a vezo paket el lindag, hag ar sehed a zizeho anezañ.
10. Ar rouejou d'her paka a zo kuzet dindan an douar, hag ar paskadur a zo war ar ravent.
11. An enkreuz a sponto anezañ a bep tu, hag a strobo e dreid.
12. E nerz a vezo displeberet gand an naon, hag an diouer a zigigo e gostou.
13. Kenta ganet, ar maro a zebro kaerder e grohenn hag a gaso e zivreh da get.
14. E fiziañs a vezo tennet er-mêz euz e delt, hag ar maro, e doare eur roue, a flastro anezañ dindan e dreid.
15. E genvreudeur a chomo en e delt e pehini ne vezo mui, ha soufr a vezo skignet ennañ.
16. E wrizioù diwar-draoñ a vezo dizehet, hag e skourrou diwar-laez a vezo skejet.
17. An eñvor anezañ a vezo kollet diwar-horre an douar, hag e ano ne vezo mui meulet el levriou-kêr.
18. Kaset e vezo kuit euz ar goulou d'an deñvalijenn, ha tennet e vezo euz ar bed.
19. E ouenn hag e nested ne chomint mui e-touez e bobl, ha ne chomo netra anezañ en e vro.
20. Ar re a zeuy war e lerh a vezo saouzanet gand an deiz ma oe kaset da goll, ar re a zo en e amzer a vezo spontet-braz.
21. Evel-se e vezo telt an den direiz, hag henez eo leh an hini ha na anavez ket Doue.

XIX. Pennad.

Job en em zihlahar dre hedat e savo a varo da veo.

1. Hogen Job a respontas, hag a lavaras :`
2. Beteg pegeid e hlaharot-hu va ene, hag e vantrot-hu ahanon gand ho lavariou ?

²⁷⁷ euz a zihed : di-hed.

3. Setu deg gwech eo bet fellet deoh va faeza, ha n'hoh-eus ket a vez da vantra ahanon.
4. Rag ma emañ en diouiziegezh, ganen emañ an diouiziegezh.
5. Hogen c'hwi a zav em eneb, hag e tamallit din va dismegeañs.
6. Gouezit bremañ da vihanna penaoz n'eo ket dre eur varn a reiz en-deus Doue va glaharet, ha va skoet gand e houliou.
7. Setu mar garman gand an droug a houzañvan, den n'am hlevo ; mar savan va mouez, den n'am didamallo.
8. Va ravent en-deus serret an Aotrou a bep tu, ha ne hellan ket mond e-biou ; teñvalijenn en-deus lakaet em hent.
9. Euz va gloar en-deus va dioueret, hag ar gurunenn en-deus tennet diwar va fenn.
10. Va dismantret en-deus a bep tu, hag ez an da get ; ha tennet en-deus diganen va oll hed, evel da eur wezenn a zo bet diskolpet.
11. E froudenn en-deus savet em eneb ; hag evel da enebour dezañ en-deus va lakaet.
12. E laeron a zo deut gantañ, hg o-deus greet o hent dreiston ; hag i o-deus gronnet va zelt.
13. Pellaet en-deus va breudeur diouzin, hag ar re a anavezen a zo tehet diouzin evel tud a-ziavêz-bro.
14. Va zud nesa o-deus va dilezet ; hag ar re a anaveze ahanon o-deus va ankounac'haet.
15. Mererien va zi, ha va mitizien o-deus va lakaet evel eun diavêziad ; hag evel eun den dizanav on bet dirazo :
16. Va mevel em-eus goulennet, ha n'eo ket deuet, petra bennag ma em-eus e halvet va-unan.
17. Va gwreg he-deus bet erez ouz va alan, ha pedet em-eus bugale va dargreiz²⁷⁸.
18. Ar re ziskiant zoken a ra goap ahanon, ha pa bellaen diouto, e lavarent droug ahanon.
19. Va huzulierein kent o-deus va argarzet, hag an hini a garen ar muia a zo troet em eneb.
20. Va hig a zo deuet da netra, ha va eskern a zo stag ouz va hrohenn, ha va muzellou hepken a zo chomet ouz va dent.
21. Ho-pezet truez ouzin, ho-pezet truez ouzin, c'hwi da vihanna va mignoned ; rag dorn an Aotrou en-deus skoet warnon.
22. Perag eh heskinit-hu ahanon evel Doue, hag e teuit-hu d'en em walha gand va hig ?
23. Piou a aotreo din ma vezo skrivet va gerioù ? Piou a roy din ma vezint roudennet en eul levr ;
24. Ma vezint kizellet war eun daolenn blom gand eur bluenn houarn, pe war ar mên gand eur broud ?
25. Rag me a oar penaoz va dasprener a zo beo, ha penaoz e savin euz a varo da veo, euz an douar en deiz diweza.
26. Ha penaoz em-bezo adarre va hrohenn en-dro din, hag e welin va Doue em hig ;

²⁷⁸ ha pedet em-eus bugale va dargreiz : klemm a ra va bugale.

27. Penaoz her gwelin va-unan, ha nann eun all, hag e sellin outañ gand va daoulagad va-unan. Hennez eo va ged ; hag a chom bepred em hreiz.

28. Perag eta e livirit-hu bremañ : Heskinom anezañ ha kavom gwrizienn eur ger en e eneb²⁷⁹ ?

29. Tehit eta a-zirag ar hleze hag a veñj ar fallagriezou ; ha gouezit penaoz ez eus eur varn.

XX. Pennad.

Sofar a zanevell kastizou ar re fallagr.

1. Neuze Sofar, an Naamatiad, a respontas hag a lavaras :
2. Rag se eo e teu va mennoziou an eil war-lerh egile, ha va spered a zo kaset tu-mañ ha tu-hont.
3. Selaoui a rin ar helenn a rez din gand da damallou, hag ar seperd a boell a zo ennon a responto evidon.
4. An dra-mañ a ouzon, hag a zo anad abaoe ma eo bet lakaet an den war an douar,
5. Penaoz gloar ar re fallagr a zo berr, ha levezet ar pilpouz ne bad nemed eur pennadig.
6. Ha pa zavje e valhder beteg an neñv, ha pa dizfe e benn beteg ar hoabr :
7. En diweza e vezo kollet evel teil ; hag ar re o-doa e welet, a lavaro : Peleh ema ?
8. Evel eun huñvre skañv, ne vezo mui kavet ; tremenoud a ray evel eur weledigez noz.
9. Al lagad en-doa gwelet anezañ n'her gwelo mui, hag al leh ma'z edo e-barz ne anavezo mui anezañ.
10. E vibien a vezo gwasket gand an dienez, hag e zaouarn a zistaolo dezañ an droug en-deus greet.
11. E eskern a vezo leun euz a zireiziou e yaouankiz, hag a hourvezo gantañ er poultr.
12. Rag o veza ma eo c'hwek an droug d'e henou, e kuz anezañ dindan e deod.
13. E espernoud a ra, ha n'hen dilez ket, hag e kuz anezañ en e staoñ.
14. E vara a vezo troet en e gov, hag a zeuy en e vouzellou e doare bestl eun aspik.
15. Ar madou en-doa lonket a zislonko ; ha Doue o zenno er-mêz euz e gov.
16. Penn an aspiked a zuno, ha teod an aner-wiber a lazo anezañ.
17. Ne welo mui goueriou ar ster, nag ar froudou mel hag amann.
18. Kement en-deus greet a baeo, ha koulskodue ne vezo ket bevezet : hag hervez e oll walllou e houzañvo.
19. Rag lakaet en-deus ar beorien en noaz-beo ha flastret en-deus anezo dindan e dreid ; skrapet e-deus o ziez, pere n'e-doa ket savet.
20. Hogen e gov n'en-deus ket bet e walh, ha pa en-deus bet an traou a hoantee, n'en-deus ket gallet beza perhenn dezo.
21. N'eus chomet netra euz e voued ; rag-se ne chomo netra euz e vadou.

²⁷⁹ ha kavom gwrizienn eur ger en e eneb : ha kavom ger pe her en e eneb.

22. Pa en-devezo e walh, e vezo gwasket, e vezo losket, hag an oll boaniou a gouezo warnezañ.

23. Pa en-devezo karget e gov, Doue a daolo warnezañ buanegez e froudenn, hag a lakay e vrezel da hlaolia warnezañ²⁸⁰.

24. Diouz begou houarn e teho, hag en em daolo war eur wareg arem²⁸¹.

25. Ar hleze tennet euz e houin, a lugerno en e vestl ; teuziou spontuz a yelo hag a zeuy warnezañ.

26. An deñvalijenn a zo el leh kuzeta euz e ene : devet e vezo gand eun tan ha ne vezo ket c’hwezet, dilezet e vezo en e delt, hag eñ glaharet.

27. An neñvou a zanevello e fallagriez, hag an douar a zavo en e eneb.

28. Madou ha gouenn e di a vezo d’an oll ; tennet e vezint digantañ e deiz froudenn Doue.

29. Hennez eo al lod a ro Doue d’an den fallagr, hag an degouez a zegas dezañ an Aotrou evid e gomziou.

XXI. Pennad.

Job a lavar penaoz Doue a gastiz ar re fallagr goude o maro.

1. Hogen Job a respontas, hag a lavaras :
2. Selaouit, me ho ped, va lavariou, hag ho-pezet keuz.
3. Va list da gomañs, ha goude-ze grit goap, mar kirit, euz ar pez a livirin.
4. Ha gand eun den eo em-eus da rendaela, evid n’am-bije ket a leh d’en em hlahari.
5. Sellit ouzin, ha bezit souezet ; ha likit ho piz war ho kenou.
6. Ha me va-unan pa zeu koun din, on spontet, ha va horv oll a gren.
7. Perag eta e vev ar re fallagr ; perag int-i ken uhel, ha kel leun a vadou ?
8. O gouenn a bad dirazo ; eul lod braz euz ho mibien hag euz ho mibien-vihan a welont.
9. Ar ged hag ar peoh a zo en o ziez ; ha n’ema ket gwalenn Doue warnezo.
10. O biohed a zo saillet ; ha ne ziforhont ket ; hala a reont, ha ne gollont ket o leue.
11. O bugale a ya er-mêz evel deñved, hag a lamm, hag a hoari.
12. Taboulinou ha telennou o-deus, hag ouz son ar binviou en em laouennaont.
13. En dudi e tremenont o deziou ; hag en eur pennadig e tiskennont d’ar bez.
14. Lavaret o-deus da Zoue : Pella diouzom, ne fell ket deom anaoud da heñchou.
15. Piou eo an Ollhalloudeg, ma servijim anezañ ? Ha petra a dalvezo deom mar pedom anezañ ?
16. Koulskoude, pa n’ema ket o madou etre o daouarn, bezet pell diouzin kuzul ar re fallagr.
17. Ped gwech e teu da vouga kleuzeur ar re fallagr, hag e c’hoarvez dihlann ganto, hag e teu Doue da ranna ganto ho poaniou e froudenn ?

²⁸⁰ e vrezel da hlaolia warnezañ : “e vrezel“ : ober a raio brezel dezañ. “da hlaolia“ : koueza evel ma ra ar glao (deuz ar galleg).

²⁸¹ en em daolo war eur wareg arem : lazet e vo gand eur wareg arem.

18. I a zo evel ar holo pa hwez an avel, hag evel al ludu a zo skignet gand eur gorventenn.

19. Doue a viro evid e vibien poaniou o zad ; ha pa vezo bet kastizet, neuze e ouezo.

20. E zaoulagad a welo e zispennadur, hag eñ a evo euz a froudenn an Ollhalloudeg.

21. Rag petra ‘vern dezañ ar pez a hoarvezo gand e di e-houde, mar deo rannet e vloaveziou dre an hanter ?

22. Piou a zesko da Zoue eun dra bennag, eñ pehini a varn ar re uhella ?

23. Hemañ a varv, hag eñ kreñv ha yah, pinvidig hag eüruz.

24. E vouzellou a zo goloet a lard, hag e eskern leun a vel.

25. Hogen egile a varv e c’hwevder e ene, hag heb madou ebed²⁸².

26. Ha koulskoude e hourvezint o-daou er poultr, hag e vezint goloet gand ar preñved.

27. Evid gwir eh anavezan ho mennoziou, hag ho parniou direiz em eneb.

28. Rag c’hwi a lavar : Peleh ema ti ar priñs-se ? Pleeh ema teltou ar re fallagr ?

29. Grit ar goulenn-ze ouz an hini a ya e-biou an hent, hag e welot penaoz e oar ervad :

30. Eo miret an den droug evid deiz e goll, hag eo kaset gand Doue beteg deiz e froudenn.

31. Piou a damallo anezañ euz e hent ? Piou a zistaolo dezañ ar pez en-deus greet ?

32. Er bez e vezo kaset, ha da eveziad e vezo war stroll ar re varo.

33. Hetuz eo bet kavet an ivernou, ha war e lerh e tedenno pep hini, evel ma eo bet dedennet eun niver braz en e raog.

34. Panaoz eta e fell deoh va dihlahari en aner, pa en em gav e lavar eneb ar wirionez.

XXII. Pennad.

Elifas a damall Job.

1. Hogen Elifas, an Temaniad, a respontas hag a lavaras :

2. An den hag-eñ a hell beza hevelebekaet ouz Doue, ha pa en-defe eur ouiziegez dreist-oll ?

3. Petra a dalv da Zoue e vijes eun den reiz ? Pe petra a roi-te dezañ, mar deo dinamm da vuhez ?

4. Hag aon en-devezo-eñ pa damallo ahanout ; ha pa zeuio d’az parnoud ?

5. Ha n’her gray ket hervez da zroug braz, hag al lod euz da fallagriezou ?

6. Rag kemeret eh-eus gouestl da vreudeur heb abeg, ha tennet eh-eus o dillad d’ar re a oa en noaz.

7. N’eh-eus ket roet a zour d’an hini a oa skuiz, ha dinahet eh-eus bara d’an hini en-doa naon.

8. Gand nerz da vreh e oa deuet an douar dit, ha dre ma oas ar galloudeka, e oa chomet ganez.

²⁸² heb madou ebed : fazi e berzoeng : heb tamm madou.

9. An intañvezed eh-eus kaset kuit o daouarn goullo, ha divreh an emzivadeg eh-eus torret.

10. Rag se eh-eus spiou tro-war-dro, hag out strafuillet gand eur spont taer.

11. Ha te a grede na gouezje ket an deñvalijenn, ha na vijes ket gwasket gand an dihlann diboell a zour ?

12. Ha ne gredes ket penaoz eo Doue uhelloh eged an neñv, ha kalz dreist ar stered ?

13. Hag e leveres : Petra a anavez Doue ? Eñ a varn evel a-dreuz eul lusenn.

14. En eur goabrenn eo kuzet, ha ne zell ket ouzom ; hag eñ a vale euz an eil penn d'egile euz an neñv.

15. Ha te a fell dit heulia hent an amzeriou koz, e pehini o-deus kerzet an dud fallagr-se.

16. Pere a zo bet dezouget a-barz o amzer, hag a zo bet diskaret gand an dihlann beteg an diazez :

17. Pere a lavare da Zoue : Pella diouzom ; ha pere a venne penaoz ne helle ober netra an Ollhalloudeg ;

18. Petra bennag m'en-doa-eñ karget o ziez a vadou ; hogen bezet pell diouzin mennoziou ar re-ze.

19. An dud reiz a welo kement-se, hag en em laouennaay ; hag an den dinamm a ray goap anezo.

20. Ha n'eo ket bet diskaret ar pezh o-doa savet ; ha ne oa ket bet lonket o dilerh gand an tan ?

21. En em laka eta dindan beli Doue, ha chom e peoh ; ha dre ze ez-pezo madou braz.

22. Kemer al lezenn euz e henou, ha laka e heriou en da galon.

23. Mar distroez ouz an Ollhalloudeg, e savi adarre, hag e pella ar fallagriez euz da delt.

24. E-leh an douar e roy dit ar roh, hag e-leh ar roh froudou aour.

25. Hag an Ollhalloudeg a zavo a-eneb da enebourien, hag ez-pezo berniou arhant.

26. Neuze e kavi da zudi en Ollhalloudeg, hag e savi da benn war-zu Doue.

27. Te a bedo anezañ, hag eñ a zelaouo ouzit, hag e tistaoli da ouestlou dezañ.

28. Eun dra a hoantai, hag e teuio dit, hag ar goulou a luho war da heñchou.

29. Rag an hini a vezo bet uvellaet, a vezo er hloar ; hag an hini a zello a-iz, a vezo salvet.

30. An den dinamm a vezo salvet, hogen salvet e vezo o veza ma vezo bet glan e zaouarn.

XXIII. Pennad.

Job a halv gand uvelded barn Doue.

1. Ha Job a respontas, hag a lavaras :

2. Va lavar a zo c'hoaz leun a hwevder, ha garvder va gouli a zo dreist va hirvoud.

3. Piou am lakay da anaoud ha da gavoud Doue, ha da vond beteg e dron ?

4. Lakaad a rin va barn dirazañ, hag e leugnin va genou a glemmou.

5. Evid ma ouezin ar pezh a responto din, ha ma poellin ar pezh a lavaro din.

6. Ne fellfe ket din e strivje ouzin gand e oll nerz, nag e waskje ahanon gand pouez e veurded.
7. Lakaet ar reizded ouzin, ha va barn a zo gounezet.
8. Hogen mar dan war-zu ar sav-heol, n'en em ziskouez ket : mar dan war-zu ar huz-heol, n'her havan ket.
9. Mar dan a-gleiz, petra a rin-me ? N'hen tizin ket : mar troan a-zehou, n'her gwelin ket.
10. Hogen eñ a anavez va hent, hag a arnod ahnaon evel an aour a vez tremenet dre an tan.
11. Va zroad en-deus heuliet e roudou, e hent em-eus miret, ha n'on ket distroet dioutañ.
12. N'on ket pellaet diouz gourhemennou e vuzellou, ha geriou e henou em-eus kuzet em askre.
13. Rag n'eus nemetañ a gement a zo eñ, ha den ne hell distrei e vennoz : ha kement ha ma kar a ra.
14. Pa en-devezo sevenet e youl warnon, e chomo c'hoaz dezañ meur a halloud heñvel.
15. Rag se eo on strafuillet dirazañ, ha pa zellan outañ, on spontet-braz.
16. Doue en-deus tenerraet va halon, hag an Ollhalloudeg en-deus va strafuillet.
17. Rag n'on ket bet kollet e-kreiz an deñvalijenn a oa en-dro din, hag al lusenn n'he-deus ket goloet va fenn.

XXIV. Pennad.

Digastiz eo aliez an torfejou er bed-mañ ; hogen Doue o hastiz er bed all.

1. N'eo ket kuzet an amzeriou gand an Ollhalloudeg ; hogen ar re a anavez anezañ ne ouzont ket e zeizioù.
2. Lod a ziloh ar vein-harz, a skrap an deñved, hag o laka en o feurvan.
3. Azen an emzivadad a gemeront, hag ejenn an intañvez a zegasont da ouestl.
4. Hent ar beorien a ziskaront, hag e vahont ivez ar re habask war an douar.
5. Lod all e doare azened gouez en distro, a ya er-mêz d'o labour ; a glask o freiz diouz ar mintin, evid aoza bara d'o bugale.
6. Ar park ha n'eo ket dezo a vedont ; hag ar rezin a zastumont e gwinienn an hini o-deus mahet.
7. An dud a gasont kuit en noaz ; tenna a reont o dillad d'ar re n'o-deus ket peadra d'en em holei er yenienn.
8. D'ar re a zo glebiet gand glao ar menezioù, hag o veza diwisk, en em guz dindan ar herreg.
9. Tra an emzivadad a gemeront dre nerz, hag e tiwiskont ar re baour.
10. D'ar re noaz, d'ar re ziwisk, d'ar re ezommeg, e tennont beteg o ed.
11. Kousket o-deus diouz ar hreisteiz war ar bern frouez a zo bet gwasket gand ar re a varv gand ar sehed.
12. Lakaad a reont an dud da geina er hêriou, hag ene ar re hloazet a harm , ha Doue n'o lezo ket da vond heb o veñji.

13. Amzent int e-keñver ar goulou ; n'o-deus ket anavezet e heñchou, ha n'int ket distroet dre e raveñchou.

14. Mintin mad e sav al lazer ; rei a ra ar maro d'an den dinerz ha d'ar paour : ha pa eo deuet an noz, eo evel eul laer.

15. Lagad an avoultrer a zell ouz an deñvalijen, o lavaroud : Lagad ebed n'am gwelo ; hag eñ a holo e benn.

16. Toulla ra an tiez en deñvalijenn, evel m'o-doa lavaret an eil d'egile pa oa deiz ; ha n'o-deus ket anavezet ar goulou.

17. Mar deu raktal goulou-deiz, e kav dezo ez eo skeud ar maro ; hag evel-se e kerzont en deñvalijenn evel er goulou.

18. Skañv eo war horre an dour ; milliget ra vezo e lod war an douar, ha na gerzet ket dre hent ar gwiniennou.

19. Ra dremeno euz a zoureier an erh d'ar wrez ar vrasa, hag e behed her haso beteg ar bez.

20. Ra vezo ankounac'haet gand an drugarez ; ra vezo ar preñv e zudi ; ra vezet ket a goun anezañ : hogen bezet diskolpet evel eur wezenn difrouez.

21. Maget en-deus an hini a oa brehagn ha na han ket : ha n'en-deus ket greet a vad d'an intañvez.

22. Diskaret en-deus ar re greñv gand e halloud ; ha pa vezo stard, ne fizio ket war e vuhez.

23. Doue en-deus roet amzer dezañ da ober pinijenn, hag eñ a zell c'hoaz balc'hoh a ze ; hogen daoulagad Doue a zo war e heñchou.

24. Savet int evid eur penandig, ha goude-ze n'int mui ; uevellaet e vezint evel pep tra, hag e vezint lamet ha trohet evel pennou an tamouezennou ed²⁸³.

25. Ma n'eo ket an dra-ze evel-se, piou a hello va hendrehi war gevier, ha tamalloud va lavariou dirag Doue ?

XXV. Pennad.

Distervez an den dirag Doue.

1. Hogen Baldad, ar Suhiad, a respontas hag a lavaras :
2. Ar galloud hag ar spont a zo gand an hini, pehini a laka ar peoh en e lehiou uhel.
3. Ha galloud a heller niveri e zoudarded. Ha war piou ne zav ket e houlou ?
4. Ha bez' e hell beza didamallet an den hevelebekaet ouz Doue, pe en em ziskoueza glan neb a zo ganet ar wreg ?
5. Setu al loar heh-unan ne luh ket, hag ar stered n'int ket glan drezi.
6. Pegen nebeud e vezo an den, pehini n'eo nemed breinadurez, ha mab an den, pehini n'eo nemed eun preñv.

XXVI. Pennad.

Peger braz ha galloudeg eo Doue.

²⁸³ pennou an tamouezennou ed : ar pennou ed a dremen dre an tamouez.

1. Hogen Job a respontas hag a lavaras :
2. Piou a gennervez ? Hag eun den dinerz eo ? Ha te a harp breh an hini ha n'eo ket kreñv ?
3. Da biou eh-eus-te roet kuzul ? Marteze d'an hini ne deo ket ar furnez gantañ ? Hag eur poell braz eh-eus diskouezet ?
4. Piou eo bet fellet dit da zeski²⁸⁴ ? Ha n'eo ket an hini pehini en-deus greet an eneu hag ar sperejou ?
5. Al langouineien o-unan, hag ar re a chom ganto, a gunuh dindan an doureier.
6. En noaz ema an ivern dirazañ, ha n'eus gouel ebed d'al leh a goll²⁸⁵.
7. Eñ eo a astenn an hanternoz war ar goulo, hag a laka an douar a-ispill war netra.
8. Eñ eo a ere an doureier er hoabr, evid na gouezint ket kevred dindan.
9. Eñ eo a vir na ve gwelet e dron, hag a astenn e goabrenn warnezañ.
10. Lakaet en-deus harz war-dro d'an doureier, keit ha ma pado ar goulou hag an deñvalijenn.
11. Peuliu an neñv a gren hag a spont gand sell e lagad.
12. Ar moriou en-deus strollet raktal gand e nerz, hag ar balhder en-deus trehet gand e furnez.
13. An neñvou en-deus kinklet gand e spered ; ha gand e zorn gwenn en-deus degaset an naer gwidiluz.
14. Setu on-eus lavaret lod euz e heñchou : ha pa eo a-veh evel eur banne ar pez on-eus klevet, piou a hello selloud ouz kurun e vrazder ?

XXVII. Pennad.

Job a ziskouez ar reuziou a hourdrouz ar re fallagr.

1. Job a lavaras c'hoaz en e lavar kuzet :
2. Beo eo Doue, pehini en-deus tennet va barn²⁸⁶, hag an Ollhalloudeg, pehini en-deus karget va ene a hwevder.
3. Endra ma veze alan ennon, ha sepred Doue em difronn
4. Va muzellou ne livirint netra a zireiz ; na va zeod netra a haou.
5. Doue ra viro na gavje din e veh²⁸⁷ tud reiz ; ken na varvin, ne zilezin ket an dinamded.
6. Ne baouezin ket en em zidamalloud evel am-eus greet : rag va halon ne rebech netra din em buhez oll.
7. Ra vezo va enebour evel eun den fallagr ; ha va heskiner evel eun den direiz.
8. Rag petra eo ged an den pilpouz, mar strap madou ar re all dre e bizoni, ha ma ne zieub ket Doue e ene ?
9. Ha Doue a zelaouo e harm pa gouezo an anken warnezañ ?

²⁸⁴ da zeski : da gelenn.

²⁸⁵ d'al leh a goll : al leh a vez kollet gand an den.

²⁸⁶ en-deus tennet va barn : a nah justis din.

²⁸⁷ e veh : ?

10. Pe hag eñ a hello en em laouennaad en Ollhalloudeg, ha pedi Doue e peb amzer ?

11. Me ho tesko dre zorn Doue ; ne guzin ket deoh ar pez a zo en Ollhalloudeg.

12. Setu c’hwi oll her goar ; ha perag eta e livirit-hu traou gwan ?

13. Setu amañ lod an den fallagr dirag Doue, hag an degouez a vir²⁸⁸ an Ollhalloudeg d’ar re ziboell.

14. Ha pa ve braz an niver euz e vibien, e tremenint oll dindan ar hleze, hag e vibien-vihan n’o-devezo ket o gwalh a vara.

15. Ar re a chomo euz e ouenn a vezo beziet en o maro²⁸⁹, hag o intañvezed ne ouelint ket.

16. Ma ra eur bern arhant, evel a zouar, mar dastum dillad evel eur bern fank ;

17. O dastumi a ray evid gwir, hogen an den reiz o gwisko ; hag an den dinamm a ranno e arhant.

18. Savet en-deus e di evel ar preñv, hag evel eur mesaer en-deus greet eur godoer.

19. Pa gousko an den pinvidig, ne gaso netra gantañ : digeri a ray e zaoulagad, ha ne gavo netra.

20. An dienez a grogo ennañ evel eun dihlan dour ; eur barr-arne a gouezo warnezañ a-hed an noz.

21. Eun avel losk a grogo ennañ hag her haso gantañ : hag evel eur gorventenn hen tenno euz e leh.

22. Doue her hastizo, ha ne esperno ket anezañ : en aner e fello dezañ tehed diouz e zorn.

23. An hini a welo al leh a behini eo kouezet, a stlako e zaouarn, hag a hoarzo goap warnezañ.

XXVIII. Pennad.

Pegen diêz eo kaoud ar furnez.

1. Eur penn en-deus an arhant d’e wazennou ; eul leh a zo e pehini e kresk an aour.

2. An houarn a zo tennet euz an douar ; hag ar mên teuzet gand an tan a dro e arem.

3. Eun amzer en-deus lakaet²⁹⁰ d’an deñvalijenn ; hag eñ a zell e-unan ouz an diwez euz a bep tra, hag ouz ar mên a zo en deñvalijenn, hag e skeud ar maro.

4. Ar froud en-deus rannet euz ar bobl a vale, ar re ‘zo bet ankounac’haet gand troad an den dieneg²⁹¹, hag a zo dihentet.

5. An douar e pehini e save ar bara evel en e leh, a zo bet diskaret dresit-penn gand an tan.

6. Safir²⁹² eo e vein, hag aour e voudenno.

7. An evn n’en-deus ket anavezet e hent, hag ar gup n’en-deus ket e welet ;

²⁸⁸ a vir : a ro.

²⁸⁹ a vezo beziet en o maro, : a dapo ar vosenn hag e vint beziet.

²⁹⁰ en-deus lakaet : en-deus lakaet an den.

²⁹¹ dieneg : ? .Marteze “en dienez“.

²⁹² Safir : ar ger galleg.

8. Mibien ar varhadourien²⁹³ n'o-deus kerzet ennañ, hag al leonez n'he-deus ket tremenet drezañ.
9. Ouz ar reier en-deus astennet e zorn, ha diskaret en-deus ar menezioù beteg o gwrizioù.
10. Gouerioù en-deus lakaet da zevel euz ar vein, hag e lagad en-deus gwelet kement a zo talvouduz-braz.
11. C'hwiliet en-deus beteg goueled ar sterioù, ha degaset en-deus d'ar goulou an traou kuzet.
12. Hogen peleh e vezo kavet ar furnez ? Ha pehini eo leh ar poell ?
13. Ne oar den petra a dalv, ha n'her haver ket e douar ar re a vev en dudioù.
14. Al lonk²⁹⁴ a lavar : N'ema ket ennon ; hag ar mor a lavar : N'ema ket ganen.
15. Ne vezo ket roet aour ar glanna eviti, ha ne vezo ket prenet e pouez an arhant.
16. Ne vezo ket hevelebekaet ouz marhadourezioù an Indez ker kaer livet, nag ouz ar sardonig²⁹⁵ talvouduz-braz, nag ouz ar safir.
17. An aour hag ar strink²⁹⁶ ne vezint ket lakaet da dalvoud anezi, ha ne vezo ket roet evid listri aour.
18. Ar pezh a zo ar brasa hag an uhella ne vezo ket anvet dirazi : hogen ar furnez a zo tennet euz a eul leh kuzet.
19. Ne vezo ket lakaet heñvel ouz topaz an Etiopia, nag ouz liou ar re skedusa.
20. A behel eta e teu ar furnez ? Ha peleh ema ar poell ?
21. Kuzet eo ouz lagad peb den beo, kuzet eo zoken ouz evned an neñv.
22. Ar gollidigez hag ar maro o-deus lavaret : Klevet on-eus ano anezi²⁹⁷.
23. Doue a anavez e hent, hag a oar peleh ema.
24. Rag eñ a wel beteg harzou ar bed ; hag a laka evez ouz ar pezh a zo dindan an neñv.
25. Eñ eo en-desu roet pouez d'an avel, ha ment d'an doureier.
26. Pa lakae eul lezenn d'ar glao, hag eun hent d'an arne ha d'ar gurun.
27. Nezue eo en-deus he²⁹⁸ gwelet, en-deus he disklêriet, en-deus he aozet, en-deus he enklasket ;
28. Hag en-deus lavaret d'an den : Setu doujañs an Aotrou, ar furnez eo ; ha pellaad diouz an droug, ar poell eo.

XXIX. Pennad.

Job a zanevell e stad kenta.

1. Job a lavaras c'hoaz en e lavar kuzet :
2. Piou a aotreo din e vezin evel er mizioù kent, evel en deizioù e pere e vire Doue ahanon ?

²⁹³ Mibien ar varhadourien : fall eo, sur a-walh, troidigez Gonideg : Sañset e vefe : Al loened fier-braz n'o-deus ket kerzet...

²⁹⁴ Al lonk : an izlonk.

²⁹⁵ ar sardonig : ? "onyx" e galleg

²⁹⁶ ar strink : ar pezh a strink. "gwer".

²⁹⁷ anezi : stumm neptu.

²⁹⁸ he : ar furnez.

3. Pa luhe e gleuzeur war va fenn, hag e valeen ouz e houlou en deñvalijenn ;
4. EvelEvel ma oan e deziou va yaouankiz, pa edo Doue en diusgwel em zelt ;
5. Pa edo an Ollhalloudeg ganen, ha va bugale en-dro din ;
6. Pa walhen va z Reid en amann²⁹⁹, ha pa skuille ar mên goueriou eoul din.
7. Pa'z een e-tal porz kêr, ha pa aozent din eur gador el leur-gêr ;
8. Ar re yaouank a wele ahanon, hag en em guze ; hag ar re goz a zave hag a chome en o zav.
9. Ar briñsed a ehane da gomza, hag a lakae o biz war o genou.
10. An dugged a dave, hag o zeod a chome stag ouz o staon.
11. Ar skouarn am hleve a lavare e oan gwenvidig, hag al lagad am gwele a roe testeni din :
12. O veza m'am-boa tennet a boan an den paour a grie, hag an emzivad n'oa den evid rei skoaz dezañ.
13. An hini a oa bet dare dezañ dizeria, a roe e vennoz din, ha me a zihlahare kalon an intañvez.
14. Ar reizded em-eus gwisket ; ha gwisket em-eus va barn evel eur vantell hag eur gurunenn.
15. Lagad an den fall on bet, ha troad an den kamm.
16. Tad ar beorien e oan ; hag an traou na anavezen ket, a zesken gand preder.
17. Karvanou an den fallagr a vreven, hag e tennen ar preiz euz e zent.
18. Hag e lavaren : Em neiz e varvin, hag e kreskin e niver va deziou evel ar wezenn-balmez³⁰⁰.
19. Va gwrizienn en em astenn a-hed an doureier, hag ar gliz a chomo war va skourrou.
20. Va gloar en em nevez bepred, ha va gwareg a greñvay em dorn.
21. Ar re a zelaoue ahanon a hortoze m'am-be komzet ; hag i a dave evid va huzul.
22. Ne gredent lakaad netra ouspenn war va geriou, ha va lavariou a goueze warnezo evel ar gliz.
23. Hag i a hede ahanon evel ar glao, hag a zigore o genou evel evid glao an diskar-amzer.
24. Ma c'hoarzen ganto, ne gredent ket ; ha goulou va dremm ne goueze ket d'an douar³⁰¹.
25. Mar felle din mond en o zouez, eh azezen ar henta ; ha pa oan azezet evel eur roue, e-kreiz an arme, e oan koulskoude dihlaharer ar re zoaniet.

XXX. Pennad.

Job a zanevell e reuz.

1. Hogen bremañ ar re yaouankoh egedon a ra goap ahanon, i a bere ne vije ket prizet din lakaad an tadou gand chas va zropell :

²⁹⁹ en amann : en dienn.

³⁰⁰ ar wezenn-balmez : evel an trêz.

³⁰¹ ha goulou va dremm ne goueze ket d'an douar : seder e chomen.

2. I a bere labour an daouarn ne oa netra diouz va meno ; ha pere a oa sellet evel ma ne zellezent ket beva ;
3. Tud dizehet gand an dienez ha gand an naon, pere a grigne ar pezh a gavent en distro, hag a oa dihez gand ar hlahar hag ar reuz ;
4. Pere a zebre geot, ha rusk gwez, hag a ree o boued euz a wrizioù juniper ;
5. Pere a yee da glask kement-se e goueled an traoniennou ; ha pa o–do a o havet, a rede di gand garmou braz ;
6. Pere a chome e poullou ar froudou, hag e keviou an douar, pe er rehier ;
7. Pere en em laouenna e doare-ze , hag a gave o dudi dindan an drein ;
8. Mibien tud diskiant ha tud dister, hag a zo stalbez an dud war an douar.
9. Bremañ on deuet da abeg d'o han, ha da hoaperez dezo.
10. Va argarzi a reont, hag e tehont pell diouzin, ha n'o-deus ket a aon o skopa ouz va dremm.
11. Digoret en-deus Doue e droñs, hag en-deus va glaharet, hag eur wesken en-deus lakaet em genou.
12. Kerkent ha ma on en em zavet, eo savet ivez raktal va ankeniou ; va zreid o-deus diskaret³⁰², hag o-deus va gwasket evel dindan engroez o froudenn.
13. Va heñchou o-deus torret, spiou o-deus aozet din, hag ar gounid a zo bet dezo ; ha den n'en-deus va hennerzet.
14. Evel dre eur vur diskaret, ha dre eun nor digor, int en em daolet warnon, hag o-deus va mahet em reuz.
15. Da netra on deuet ; evel an avel eh-eus kaset va hoant ; ha va yehed a zo tremenet evel eur goabrenn.
16. Hogen bremañ e teu da weñvi va ene ennon va-unan, hag an deizioù glahar a gouez warnon.
17. A-hed an noz eo toullet va eskern gand ar boan ; hag ar re a zebr ahanon ne gouskont ket.
18. Gand an niver braz anezo eo peurzevet va zae ; hag evel pichourell eur houglou o-deus va strobet.
19. Evel pri on deuet ; heñvel on ouz poultr hag ouz ludu.
20. Me a harm ouzit, ha ne zelaouez ket ouzin : sevel a ran, ha ne zellez ket ouzin.
21. Troet out, hag out deuet da veza kriz em heñver ; ha gand kaleder da zorn eh enebiez ouzin.
22. Va uhellaet eh-eus, ha goude beza va zavet dreist an avel, eh-eus va brevet.
23. Me a oar penaoz eh-eus va roet d'ar maro, e peleh eo merket an ti euz ar re oll a vev³⁰³.
24. Koulskoude ne astennez ket da zorn evid o holl ; ha mar kouezont, te a denn anezo a boan.
25. Me a ouele gwechall war ar re a oa glaharet, ha va halon he-doa truez ouz ar paour.
26. Ar mad a hortozen, hag an droug a zo deuet din : ar gouglou a heden, hag an deñvalijenn a zo deuet.
27. Entanet on em hreiz heb ehan ; deizioù ar hlahar a zo deuet pa n'o geden ket.
28. Trist e kerzen, hogen heb froudenn ; sevel a reen, hag e harmen e-touez an dud.

³⁰² va zreid o-deus diskaret : diskaret o-deus-i va zreid.

³⁰³ e peleh eo merket an ti euz ar re oll a vev : el leh ma'z aio an oll re a vev.

29. Da vreur on bet d'an erevent, ha da genvreur d'an aotruzed³⁰⁴.
30. Va hrohenn a zo deuet du warnon, ha va eskern a zo zo bet devet gand ar wrez.
31. Va zelnn a zo troet e keinvan, ha va ograou e moueziou klemmvanuz.

XXXI. Pennad.

Job a enklask hag a ro da anaoud e vuhezegez.

1. Eur marhad em-eus greet gand va daoualgad, evid na likiin ket zoken va houn en eur werhez.
2. Rag pe lod a roje Doue din diwar-laez, ha pe zegouez a aotreje din an Ollhalloudeg el lehiou uhel ?
3. Ha ne vezo ket kollet ar re fallagr, ha ne vezo ket distaolet ar re zireiz ?
4. Ha ne zell ket Doue ouz va heñchou, ha ne niver-eñ ket va oll gammejou ?
5. Ma em-eus kerzet er valhded ha ma o-deus hastet va zreid en droidell :
6. Ra bouezo Doue ahanon en eur valañs reiz, ha ra anavezo va eeunder.
7. Mar deo disytroet va hammejou diwar an hent, ha ma he-deus va halon heuliet va daoulagad, ha ma eo staget eur saotr ouz va daouarn ;
8. Ra hadin, ha ra zebro eun all, ha ra vezo diwriennet va gouenn.
9. Mar deo bet touellet va halon gand eur wreg, ha ma em-eus aozet spiou ouz dor va mignon ;
10. Ra vezo gwallet va gwreg gand eun all, ha ra hoarvezo re all warnezi.
11. Rag eur gwall eo, hag eur fallagriez ar vrasa.
12. Eun tan eo hag a zev beteg an diweza gwrienn.
13. Ma n'em-eus ket prizet mond e barn, gand va mevel ha gand va matez, pa strivent ouzin :
14. Rag petra a rin-me pa zavo Doue evid barna ? Ha pa ray goulennou din³⁰⁵, petra a respontin-me dezañ ?
15. Ha n'eo ket an hini en-deus va hrouet e kov va mamm, en-deus ivez he hrouet-hi ; ha n'eo ket an heveleb Doue en-deus or hrouet on-daou ?
16. Ma em-eus dinahet d'ar beorien ar pez o-doa c'hoant da gaoud ; ha ma em-eus lakaet daoulagad an intañvez da hortozì :
17. Ma em-eus debret va boued va-unan, ha ma n'en-deus ket ivez an emzivad debret lod anezañ :
18. (Rag an druez a zo kresket ganen a-vihanig ; ha deuet eo ganen er-mêz euz a gov va mamm).
19. Ma em-eus lezet da vervel ar re a oa en noaz, hag ar paour a oa diwisk :
20. Ma n'o-deus ket e gostou va benniget, ha ma n'eo ket bet tommet gand kreñ va deñved :
21. Ma em-eus savet va dorn war an emzivad, pa en em welen zoken ar hreñva e-tal ar porz :
22. Ra gouezo va skoaz euz he framm, ha ra vezo brevet va breh gand he oll eskern.

³⁰⁴ aotruzed : struzkañvaled.

³⁰⁵ pa ray goulennou din : pa ray goulennou ganin.

23. Rag bepred em-eus doujet Doue evel koummou savet a-uz din, ha n'em-eus ket gellet gouzañvi e bouez.

24. Ma em-eus kredet e ve an aour va nerz, ha ma em-eus lavaret d'an aour ar glanna : Te eo va fiziañs :

25. Ma on en em laouennaet gand va madou braz ha gand al lod braz am-eus dastumet gand va daouarn.

26. Ma em-eus sellet ouz an heol pa luhe, hag ouz al loar pa gerze hag hi sklêr-braz :

27. Ha mar deo laouennaet va halon e kuz, ha ma em-eus kaset va dorn d'am genou evid poki dezañ :

28. Ar pezh a zo eur fallagriez ar vrasa, hag an dinah euz a Zoue an Uhel-meurbed :

29. Ma on en em laouennaet euz a goll an hini a gasee ahanon, ma em-eus tridet o weloud droug dezañ ;

30. Rag n'em-eus ket roet va zeod da behi o trougprezegi outañ.

31. Ma n'o-deus ket lavaret tud va zelt : Piou a roy deom e gig evid ma or-bezo or gwalh ?

32. An diavêziad n'eo ket chomet er-mêz, va dor a zo bet digor d'an ergerzer.

33. Ma em-esu kuzet va fehed evel eun den, ha ma em-eus kuzet em hreiz va fallagriez :

34. Ma on bet spontet gand ar strollad braz a dud, ma em-eus krenet dirag dispriz va herent-nez : ha ma n'on ket tavet heb mond er-mêz euz an nor.

35. Piou a aotreo din eur selaouer, evid ma klevo an Ollhalloudeg va youl ; ha ma skrivo eul levr an hini a varn :

36. Evid ma tougin anezañ war va skoaz, ha ma e likiin en-dro d'am penn e doare eur gurunenn.

37. Da bep kammed a rin e livirin e heriou, hag evel d'am priñs e kinnigin anezañ.

38. Mar garm va douar em eneb, ha mar gouel e irvi gantañ ;

39. Mar em-eus debret e frouez heb arhant, ha ma em-eus glaharet kalon ar re o-deus e labouret :

40. Ra vezo din drez e-leh gwiniz, ha drein e-leh heiz.

XXXII. Pennad.

Diwez geriou Job.

Eliu a damall e vignoned o veza n'o-deus furnez ebed.

1. Hogen an tri den-ze a ehanas da responta, o veza en em gave gwirion e-unan.

2. Ha neuze Eliu, mab Barac'hel ar Buziad, euz a ouenn Ram, a zavas droug ennañ a-eneb Job, o veza ma en em lavare gwirion dirag Doue ;

3. Sevel a reas ivez droug ennañ a-eneb e vignoned, o veza n'o-doa ket kavet a respont reiz, hogen m'o-doa hepken tamallet Job.

4. Eliu eta a hortozas m'en-doe komzet Job ; o veza ma oa ar re all kosoh egetañ.

5. Hogen pa welas penaoz an tri all n'o-doa ket gellet responta, e savas droug braz ennañ.

6. Hag Eliu, mab Barac'hel ar Buziad, a respontas hag a lavaras : Ar yaouanka on, ha c'hwi a zo kosoh egedon ; rag se em-eus stouet va fenn, ha ne greden ket rei va mouez³⁰⁶.

7. Rag me a grede penaoz eun oad brasoh ho lakaje da gomza, hag an niver euz ar bloaveziou a zeskfe deoh va furnez.

8. Hogen, war a welan, ar spered a zo en dud, hag ali an Ollhalloudeg a ro ar poell.

9. N'eo ket ar re gosa a zo ar re furra ; eur varn vad ne zeu ket bepred euz a henou eun den koz.

10. Rag se e livirin : Selaouit ahanon, hag e tiskouezin ivez deoh va furnez.

11. Rag gortozet em-eus ho lavariou, klevet em-eus ho poell, keit ha ma hoh-eus strivet :

12. Ha keit ha ma em-eus kredet e lavareh eun dra, e sellen ouzoh ; hogen, war a welan, hini ahanoh ne hell kendrehi Job, na responta d'e lavariou :

13. Gand aon na lavarfeh : Kavet on-eus ar furnez ; Doue eo en-deus he zistaolet, n'eo ket eun den.

14. N'en-deus lavaret netra din ; ha ne respontin ket dezañ diouz ho lavariou.

15. Aon o-deus bet, ha n'o-deus respontet netra ; hag i o-deus tavet.

16. Goude eta ma em-eus gortozet, ha n'o-deus ket komzet ; ma int chomet a-zav, ha n'o-deus greet respont ebed :

17. Me a responto d'am zro, hag a ziskouezo va gouiziegez.

18. Rag me a zo leun a lavariou, hag ar spered a zo ennon a wash warnon.

19. Setu va hov a zo evel gwin nevez heb êr³⁰⁷, hag a dorr al listri nevez.

20. Komza a rin, hag eh arzarvin eun nebeud ; digeri a rin va muzellou, hag e respontin.

21. N'am-bezo azaouez evid den, ha ne geidin³⁰⁸ den ket an den ouz Doue.

22. Rag ne ouzon ket pegeid e padin, ha ma ne vezin ket tennet a-barz nemeur ahann gand va hrouer.

XXXIII. Pennad.

Eliu a damall Job da veza en em zavet ouz Doue.

1. Selaou eta, Job, va geriou, ha laka evez ouz va oll lavariou.

2. Setu em-eus digoret va genou, ha va zeod a gomzo frêz.

3. Euz a eeunder va halon e teuy va lavariou, ha va muzellou a roy da anaoud eur wir gelennadurez.

4. Spered Doue en-deus va greet, ha c'hwez an Ollhalloudeg en-deus va enaouet.

5. Mar gellez, respont din, ha sav dirazon.

6. Setu me a zo bet krouet gand Doue kerkoulz ha te, ha gand an heveleb pri on bet doareet.

7. Dre ze ne weli burzud ebed ennon evid da sponta, ha ne vezi ket mantret gand va displeg.

³⁰⁶ rei va mouez : rei da houzoud ar pez a zoñjen.

³⁰⁷ heb êr : ?

³⁰⁸ ne geidin : ne geñveriin.

8. Dirag va diskouarn eh-eus komzet, ha da glevet em-eus o lavaroud ar geriou-mañ :
9. Glan on, hag heb gwall ; dinamm on, ha n'eus ket a fallagriez ennon.
10. O veza ma en-deus kavet abeg a glemmou ennon, dre ze en-deus kredet e oan enebour dezañ.
11. Er hefiou en-deus lakaet va zreid, ouz va oll ravenchou en-deus lakaet evez.
12. E kement-se eta ne hellez ket beza didamallet ; rag me a responto dit penaoz eo brasoh Doue eged an den.
13. Ha striva a ri outañ, o veza n'en-deus ket respontet d'az oll heriou ?
14. Doue ne gomz nemed eur wech, ne lavar ket ket diou wech an heveleb tra.
15. En huñvre, er weledigez noz, pa gouez ar mored war an dud, ha pa gouskont en o gwele ;
16. Neuze e o e tigor diskouarn an dud, hag e tesk dezo ar pez a dleont da houzoud ;
17. Evid ma pella an den euz an droug a hellfe da ober, ha ma tieubo anezañ euz ar balhder ;
18. Evid tenna e ene euz ar vreinaurez ; ha miroud na gouezo e vuhez dindan ar hleze.
19. E gastiza a ra c'hoaz gand ar boan en e wele, hag e laka e oll eskern da zizeha.
20. Er stad-se eo argaruz ar bara dezañ, hag argaruz d'e ene ar boued a gave mad kent.
21. E gig a ya da get, hag e eskern, pere a zo goloet, a zo en noaz.
22. Tostaad a ra e ene ouz ar vreinaurez hag e vuhez ouz ar maro.
23. Mar deu eun êl etre mil da gomza evitañ, ha ma ro da anaoud eeunder an den ;
24. Doue en-devezo truez outañ, hag a lavaro : Dieub anezañ evid na ziskenno er vreinaurez ; kavet em-eus leh da ober trugarez dezañ.
25. E gig a zo eet da get gand e hloaziou, ra zistroy da zeiziou e yaouankiz.
26. Pedi a ray Doue, hag eñ a vezo trugareg en e geñver ; hag an den a welo e zremm el levenez, ha Doue a zistaolo dezañ e eeunder kent.
27. Selloud a ray ouz an dud, hag e lavaro : Peeht em-eus, gwallhreet em-eus evid gwir, ha n'on ket bet kastizet evel ma tellezen beza.
28. Dieubet en-deus e ene, evid na'z aje ket d'ar maro, hogen ma vevje ha ma welje ar goulou.
29. Setu kement a ra Doue beteg teir gwech e pep hini.
30. Evid tenna o eneo euz ar vreinaurez, hag o goulou euz a houlou ar re veo.
31. Laka evez, Job, ha selaou ahanon ; ha tav endra ma komzan.
32. Hogen ma eh-eus eun dra bennag da lavaroud, respont din, komz ; rag me a fell din en em zidamallfes.
33. Ma n'eh-eus ket, selaou ahanon ; tav, ha me a zesko dit ar furnez.

XXXIV. Pennad.

Eliu a damall c'hoaz Job.

1. Eliu o komza bepred, a lavaras an dra-mañ :
2. Tud fur, selaouit va geriou, tud gouizieg, likit evez ouzin.
3. Rag ar skouarn a varn ar geriou, evel ma varn ar staon blaz ar boued.
4. Enklaskom petra eo ar reiz, ha gwelom etrezom petra eo ar gwella.
5. Rag Job en-deus lavaret : Eun den gwirion³⁰⁹ on, ha Doue en-deus direizet va barn.
6. Rag e gaou on bet barnet ; gand gwall zaeziou on bet toullet heb ma em-eus pehet.
7. Peleh ema an den heñvel ouz Job, pehini a ev goaperez evel dour :
8. Pehini a gerz gand an dud fall, hag a vale gand ar re fallagr ?
9. Rag lavaret en-deus : An den na vezo ket hetuz da Zoue, ha pa gerzje gantañ,
10. Dre ze, tud kaloneg, selaouit ahanon. Pell ema an drougiez euz a Zoue, hag ar fallagriez, euz an Ollhalloudeg.
11. Rag hervez e oberiou e roio d'an den, hag hervez e heñchou e tistaolo da bep hini.
12. Evid gwir Doue ne varn ket en aner, hag an Ollhalloudeg ne zireiz ket ar varn.
13. Piou en-deus lakaet en e leh war an douar ? Pe piou en-deus lakaet da vestr war ar bed en-deus krouet ?
14. Mar kas e galon etrezeg ennañ, e tenno dezañ e spered hag e alan.
15. Pep kig a yelo da get kevred, hag an den a zistroio e ludu.
16. Ma eh-eus eta skiant-vad, selaou ar pezh a leverer, ha laka evez ouz va lavar.
17. Ha bez' e heller yac'haad an hini ha na gar ket ar reiz ? Ha penaoz e tamallez-te ker stard an hini a zo ker reiz ?
18. Eñ pehini a lavar da eur roue : Den difeiz ; hag a halv fallagred an duced :
19. Pehini n'en-deus ket a azaouez evid ar briñsed ; ha na anavez ket ar maher pa striv ouz ar paour ; rag i oll a zo labour e zaouarn.
20. I a varvo raktal, hag e-kreiz an noz ar poblou a vezo strafuillet ; hag i a yelo e-biou, hag ar maher a vezo lamet heb dorn ebed³¹⁰.
21. Rag daoulagad Doue a zo war heñchou an dud, hag eñ a laka evez ouz o oll gammejou.
22. Nag an deñvalijenn, na skeud ar maro ne hell kuza eno ar re a ra fallagriez.
23. Rag n'ema mui neuze e galloud an den dond e barn dirag Doue.
24. Eul lod diniver a vrevo, hag e lakay da zevel re all en o leh.
25. Rag eñ a anavez o oberiou ; ha dre ze e tegaso an noz, hg i a vezo brevet.
26. Evel tud fallagr e skoio anezo dirag an oll ;
27. I pere dre wanded a zo en em dennet dioutañ, ha n'eo ket fellet dezo poella e oll heñchou.
28. Evid ma lakajent da bigna etrezeg ennañ garmou ar re baour, ha ma klevje mouez ar re a zo en dienez.
29. Rag ma ro ar peoh, piou a damallo anezañ ? Mar kuz e zremm, piou a zello outañ, ha war an oll vroadou, ha war an oll dud ?
30. Eñ eo a laka da rena an den pilpouz en abeg da behejou ar bobl.
31. Pa em-eus eta komzet euz a Zoue, ne virin ket ivez ouzit d'e ober.

³⁰⁹ gwirion : didamall.

³¹⁰ heb dorn ebed : heb na vefe lamet gand den ebed.

32. Ma em-eus faziet, desk ahanon ; ma em-eus lavaret traou direiz, ne gomzin mui.

33. Ha Doue a houlenno kont diganez euz an dra-mañ, o veza ma eo dihetet dit ? Rag te eo eh-eus komzet da genta, ha n'eo ket me eo. Ma anavezez eun dra gelloh, komz.

34. Ra gomzo ouzin an dud poelleg ; ha ra zelaouo ahanon an den fur ;

35. Hogen Job en-deus komzet en eun doare diboell, ha n'eus furnez ebed en e lavariou.

36. Va zad, arnod Job beteg an diwez ; na ehan ket da skei war an den fallagrise.

37. Rag eñ a laka c'hoaz an droug-pedenn war e behejou ; ra vezo trehet adarre ganeom ; ha neuze ra halvo Doue e barn gand e lavariou.

XXXV. Pennad.

Eliu a damall Job adarre.

1. Eliu a gomzas c'hoaz evel-henn :

2. Ha te a gav dit e ve reiz da vennoz, pa levez : Eeunoh on eged Doue ?

3. Rag lavaret eh-eus : Ar pezh a zo reiz na het ket dit : pe petra a dalvezo dit mar pehan ?

4. Rag se e respontin d'az lavariou, ha d'az mignoned kenkoulz ha dit.

5. Sav da zaoulagad etrezeg an neñv, ha sell, hag e weli penaoz eo uhelloh an neñvou egedout.

6. Mar pehez, pe haou a zeuio dezañ ? Ha mar deu da fallagriezou da greski, petra a ri-te ouz Doue ?

7. Hogen mar dout eun den gwirion³¹¹, petra a roi-te dezañ, pe petra a zegemero-eñ euz da zorn ?

8. Da fallagriez a noazo d'an den a zo heñvel ouzit : ha da eeunder a vezo da skoazell da vab an den.

9. En abeg d'al lod braz euz an droug-prezegerien, e harmint ; hag en abeg da wall-nerz breh an diranded, e ouelint.

10. Ha n'en-deus ket lavaret : Peleh ema an Doue pehini en-deus va greet ?, pehini a laka da gana kanaouennou en noz ?

11. Pehini ol laka da veza desketoh eged loened an douar, ha gouziet eged evned an neñv.

12. Neuze e harmint, hag eñ ne glevo ket anezo, en abeg da rogentez ar re zroug.

13. Doue eta ne glevo ket en aner, hag an Ollhalloudeg a lakay evez ouz abeg pep hini.

14. Ha pa eh-eus lavaret : Na laka ket a evez ; barn da-unan dirazañ, ha gortoz eñ.

15. Rag ne ziskouez ket bremañ e oll froudenn, ha ne gastiz ket ar gwall oberiou gand garvder.

16. En aner eta e tigor Job e henou, hg e lavar kement a heriou diouizieg.

³¹¹ gwirion : didamall.

XXXVI. Pennad.

Eliu a erbed Job da ober e hounid euz a gastizou Doue.

1. Ha Eliu a lavaras c'hoaz :
2. Va gouzañv eun nebeud, ha me a zisklêrio dit va mennoz ; rag bez' em-eus c'hoaz da gomza evid Doue.
3. Adaleg ar penn kenta e kemerin ar pezh a ouzon, hag e tiskouezin penaoz va Hrouer a zo gwirion.
4. Rag gwir eo penaoz n'eus ket a hevier em lavariou, ha me a ziskouezo dit penaoz eo eur wir ouiziegez.
5. Doue ne zistaol ket ar re halloudeg, o veza ma eo galloudeg e-unan.
6. Hogen en zieub ket ar re fallagr, hag eñ a ro e varn d'ar re baour.
7. Ne denno ket e zaoulagad diwar an den gwirion ; hag eñ a laka ar roueed war o zron da viken, hag a starda anezo.
8. Ha mar dema eur re bennag anezo er chadennoù, ha stardet gand kerdin ar baourentez ;
9. E tisklêrio dezo o oberiou, hag o gwallou, ha penaoz int bet tud taer.
10. Digeri a ray ivez o diskouarn evid o zamalloud : hag eñ a gomzo outo, evid ma tostroit euz o fallagriez.
11. Mar selaouont anezañ, ha mar sevenont d'e her, e tremenint o oll zeizioù el levenez, hag o bloavezioù er hloar.
12. Hogen ma ne zealouont ket anezañ, e vezint treuzet gand ar hleze, hag e varvint en o follentez.
13. An douellerien hag ar re wan a denno warnezo buanegez Doue : ha ne harmint ket pa vezint trehet.
14. O ene a varvo er reuz, hag o buhez e-touez ar re laosk.
15. Tenna a ray ar paour euz e anken, hag e tigor e skouarn pa zeuy ar hlahar.
16. Da zieubi a ray eta euz a henou al lonk striz ha dioueled³¹², evid da lakaad en ehonder ; hag ehan³¹³ da daol a vezo leun a voued c'hwek.
17. Da gefridi a zo bet barnet evel hini eun den fallagr, hogen ar gefridi hag ar varn a vezo distaol dit.
18. Na zeuet ket eta ar vuaneged da drehi ahanout, ha d'az lakaad da vaha den : ha na zeuet ket al lod braz euz ar roue d'az tistrei.
19. Diskar da vrazder heb enkreuz, hag ar re a wallhira gand o nerz.
20. Na astenn ket an noz, evid ma pigno ar poblou en he leh.
21. Laka evez n'en em rojes d'ar fallagriez : rag deraouet eh-eus d'he heulia en da reuz.
22. Setu Doue a zo uhel-braz en e nerz, ha n'eus lezenner ebed heñvel outañ.
23. Piou a hello enklaskoud e heñchou ? Pe piou a hell lavaroud dezañ : Fallagriez eh-eus greet ?
24. Az-pezh koun penaoz ne anavezet ket e oberiou, pere a zo bet kanet gand an dud.
25. An oll dud her gwel, ha pep-hini a zell outañ a-bell.
26. Setu Doue a zo braz, hag eñ a dreh or gouiziegez ; diniver eo e vloavezioù.

³¹² dioueled : heb goueled.

³¹³ ehan : ?

27. Eñ pehini a zav ar banneou glao, hag a laka da goueza an doureier evel froudou,

28. Pere a ziver euz ar hoabr, hag a holo kement a zo dindanno.

29. Eñ pehini a led ar hoabr, evel da delt dezañ :

30. A laka da luha e houlou dreist, hag a ziskouez goueled ar mor.

31. Evel-se e varn ar poblou, hag e ro ar boued da galz a dud.

32. Ar goulou a guz en e zaouarn, hag e hourhemenn dezañ ma en em ziskouezo adarre.

33. Rei a ra da anaoud d'e vignon penaoz ar goulou a zo e lod, hag e hello pignad etrezeg ennañ.

XXXVII. Pennad.

Eliu a gomz diwar-benn galloud ha furnez Doue.

1. Rag se e kren va halon, hag e tilamm euz he leh.

2. Selaouit gand evez e vouez spontuz, hag ar son a zeu er-mêz euz e henou.

3. Lakaad a ra evez ouz kement a zo dindan an neñvou, hag e houlou a gas beteg harzou an douar.

4. Eun trouz braz a zavo war e lerh, hag eñ a ray kurun gand mouez e vrazder, ha pa vezo klevet e vouez, ne vezo ket gellet he foella.

5. Doue a vezo souezuz e mouez e gurun, eñ pehini a ra traou braz, ha dreist or skiant.

6. Eñ pehini a hourhemenn d'an erh da ziskenni war an douar, kerkoulz ha da hlaveier ar goañv, ha da zihlann an doureier ;

7. Pehini a laka eun arouez e dorn an oll dud, evid ma anavezo pep hini e oberiou.

8. Al loen a yelo en e doull, hag a chomo en e geo.

9. Euz ar hreisteiz e teuy an arne, hag euz an hanternoz ar yenienn.

10. Gand c'hwez Doue e teu da galedi ar skorn, ha goude-ze e teu an doureier d'en em leda.

11. An ed a houlenn ar hoabr, hag ar hoabr a skign ar goulou.

12. Hag i a luh a bep tu, e peleh bennag ma o has youl an hini o ren, hag hervez ar gourhemenn a ro dezo, war horre an douar,

13. Pe en eur vreuriez, pe en e zouar, pe en eul leh bennag all en-devezo o haset en e drugarez.

14. Laka evez out kement-mañ, Job ; arzao, ha sell ouz burzudou Doue.

15. Ha te a oar peur en-deus Doue gourhemennet d'ar glaveier diskoueza o goulou d'o hoabr ?

16. Ne anavezete ket heñchou braz e goabr, hag e ouiziegez klok ?

17. Ha n'eo ket tomm da zillad, pa hwez avel ar hreisteiz war an douar ?

18. Greet eh-eus marteze gantañ an neñvou, pere a zo ker stard hag arem.

19. Diskouez deom petara a livirim dezañ ; rag ni a zo goloet a zeñvalijenn.

20. Piou a zisklêrio dezañ ar pezh a lavaran ? Mar komz den, e vezo dismantret.

21. Hogen bremañ ne welont ket ar goulou ; tevaad a ra raktal an êr e koabr, hag eun avel a dremeno hag a skigno anezo.

22. Euz an hanternoz e teu an aour, hag ar veuleudi a roer da Zoue a laka da grena.

23. Rag ne hellom ket e boella evel ma eo dleet : braz eo gand e varn ha gand e wirionez ; ha ne heller ket komza diwar e benn.

24. Rag se e vezo doujet gand an dud, ha den ebed, pegen fur bennag e kav dezañ beza, ne gredo selloud outañ.

XXXVIII. Pennad.

Doe a gomz ouz Job hag a zesk anezañ.

1. Neuze an Aotrou a gomzas ouz Job euz a eur gorventenn, hag a lavaras :
2. Piou eo hennez pehini a vesk aliou mad gand lavariou dievez ?
3. Laka da houriz war da zargreiz evel eun den : me a ray goulennou dit³¹⁴, ha te a responto din.
4. Peleh edos pa daolen diazez an douar ? Lavar-eñ din, ma her gouezez.
5. Piou en-deus kemeret e vent, ma hen anavezez ? Pe piou en-deus astennet eul linenn warnezañ ?
6. War petra eo stardet e zoliou ? Pe piou en-deus lakaet e vên korn ?
7. Pa veule kevred ahanon stered ar mintin, ha pa en em laouennae oll vugale Doue ?
8. Piou en-deus lakaet harz ouz ar mor, pa zeue er-mêz evel euz a gov e vamm ?
9. Pa lakaen warnezañ eur goabrenn da wisk, hag e lakaen en-dro dezañ eul lusen e doare maillur eur bugel.
10. Va harzou em-eus lakaet war e dro ; drefen ha doriou em-eus lakaet dezañ ;
11. Hag em-eus lavaret : Beteg amañ ez i, ha n'ez i ket pelloh ; hag amañ e torri stambouh da goummou.
12. Ha te eo, abaoe ma out ganet, eh-eus gourhemennet d'ar werelauenn, hag eh-eus diskouezet e leh da darz-an-deiz ?
13. Ha te eo eh-eus kemeret an douar dre e harzou, eh-eus e hejet, ha distaolet dioutañ ar re fallagr ?
14. An arouez a vezo nevezet evel pri, hag hi a chomo en he sav evel eur zae.
15. O goulou a vezo tennet d'ar re³¹⁵ fallagr, hag o breh savet a vezo torret.
16. Hag-eñ out beteg goueled ar mor ? Ha baleet eh-eus e traoñ al lonk ?
17. Ha digoret eo bet dit doriou ar maro, ha gwelet eh-eus ar perzier teñvalze ?
18. Ha sellet eh-eus piz ouz hed an douar ? Lavar din pep tra, ma anavezez anezo.
19. Perhini eo an hent a gas d'ar goulou, ha peleh ema an deñvalijenn ?
20. Evid ma kasi pep hini d'e harzou, ma anavezez an hent ma kerzont drezañ.
21. Ha te a ouie neuze e tlees genel³¹⁶ ? Ha te a anavez niver da zeiziou ?
22. Hag eet out e teñzoriou an erh ? Ha gwelet eh-eus-te teñzoriou ar hazarh,
23. Em-eus aozet evid amzer an enebour, evid deiz an emgann hag ar brezel ?
24. Dre be hent e teu ar goulou, hag en em rann ar wrez war an douar ?
25. Piou en-deus roet red d'ar glao direiz, hag eun treiz da drouz ar gurun,

³¹⁴ dit : diganit.

³¹⁵ d'ar re ;; digand ar re

³¹⁶ genel : (galleg).

26. Evid ma hlaoje war eun douar n'eus den e-barz, en eun distro, e pehini ne chom den ebed ?
27. Evid ma leunfe eur vro fraost ha gwastet, ha ma lakaje da zevel geot glaz ?
28. Piou eo tad ar glao ? Ha piou en-deus greet ar banneou gliz ?
29. A gov piou eo deuet ar skorn ? Ha piou en-deus ganet ar reo a gouez euz an neñv ?
30. E doare mein e teu an doureier da galedi, ha gorre al lonk a zeu da veza stard.
31. Ha te a hello strolla oll stered luhuz ar Pleiadez, pe skigna tro Arkturus ?
32. Ha te eo a zegas steredenn ar mintin en he amzer, hag a laka da zevel steredenn ar pardaez war bugale an douar ?
33. Ha te a anavez reiz an neñvou, hag a ziskouez o nerz war an douar ?
34. Ha te a zavo da vouez er hoabr, ha goloet e vezi gand o doureier stank ?
35. Ha te a gaso ar hurunou, hag ez aint ; hag i a lavaro dit pa zistroint : Setu-ni ?
36. Piou en-deus lakaet ar furnez e kalon an den ? Pe piou en-deus roet an anaoudegez d'ar hillog da gana ?
37. Piou a zisplego reiz an neñvou, ha piou a lakay da ehana o unvaniez ?
38. Pa en em skigne ar poultr war an douar ha pa zeue ar moudennou d'en em galedi ?
39. Ha te a gemero ar preiz evid al leonez, hag a dorro naon he leonedigou,
40. Pa int gourvezet en o heviou, ha pa aozont spiou en o mougeviou.
41. Piou a ro he boued d'ar vran, pa zo eet he re vihan diouti, ha pa harmont ouz Doue, o veza n'o-deus boued ebed ?

XXXIX. Pennad.

Bepred e komz Doue ouz Job.

1. Ha te a anavez ar pred e pehini ar gevr gouez a zeu da hala war ar rehier, ha lakaet eh-eus-te evez ouz ganedigez ar harvezed ?
2. Ha niveret eh-eus-te ar miziou e-pad pere e tougont, ha gouzoud a rez-te e pe bred e hanont ?
3. Stoui a reont, hag e hanont, en eur yudal.
4. O gevirigou a ya kuit diouto, hag a ya d'ar peurvan ; mond a reont er-mêz, ha ne zistroont mui etrezeg enno.
5. Piou en-deus lezet da vond an azen gouez, ha piou en-deus torret e ereou ?
6. Roet em-eus eun ti dezañ en distro, ha teltou en eun douar fraost.
7. Eñ a ra goap euz a strolladou kêr, ne glev ket mouez eur mestr kriz.
8. Selloud a ra a bep tu ouz menezioù e beuri, hag e klask dre oll geot glaz.
9. Ar rinoseros hag eñ a fello dezañ da zervija, ha chom a ray en da graou ?
10. Ha staga a ri-te ar rinoseros ouz da ere evid arad, hag evid terri moudennou an traoniennou war da lerh ?
11. Ha te a fizio en e nerz braz, hag a lezo gantañ da labour ?
12. Ha te a gred dit penaoz e roio dit ar pezh ez-pezo hadet, hag e lenuio da leur ?
13. Pluñv an otrus a zo heñvel ouz pluñv ar herheiz hag ar sparfell.
14. Pa zilez he viou war an douar, ha te a dommo anezo er poultr ?

15. Ankounac'haad a ra-hi penaoz e hellont beza mahet gand an treid, pe beza friket gand al loened gouez.

16. Kriz eo e-keñver he labousedigou, evel pa ne vent ket dezi ; en aner he-deus labouret heb aon ebed.

17. Rag Doue n'en-deus ket roet dezi ar furnez ha n'en-deus ket roet dezi ar poell.

18. Mar deu ar pred, e sav he diouaskell ; hag e ra goap euz a eur marh, hag euz ar marheg.

19. Ha te eo a roio d'ar marh e nerz, pe hel lakay da houriza³¹⁷ ?

20. Hag e lakaad a ri da lammoud evel killeien-raden ? C'hwez e zifronn a zo spontuz.

21. Gand e droad e toull an douar, hag e lamm gand herrder : enebi a ra ouz an dud gand o armou.

22. N'en-deus aon ebed, ne gren ket rag ar hleze.

23. Ar saeziou a zon war e dro, ar goafiou hag ar hlezeier a sked a-ziouz dezañ.

24. Eoni a ra, skrija a ra, hag e lonk an douar, ha n'eo ket saouzanet gand trouz an trompillou.

25. Pa glev ar horn-boud e lavar : Deom ; a-bell e c'hwez ar brezel, ha mouez an duged, hag urherez³¹⁸ an arme.

26. Ha dre da furnez eo en em holo ar sparfell a bluñv, en eur zisplega e ziuaskell war-zu ar hreisteiz ?

27. Ha dre da hourhemennou eo e sav an erer, hag e laka e neiz el lehiou ar re uhella ?

28. Chom a ra e-kreiz ar vein, war ar menezioù uhel, war ar rehier n'eus den evid tostaad outo.

29. Ahano e sell ouz e breiz, hag e zaoulagad e wel a-bell.

30. E eredigou a zun ar gwad ; hag e peleh bennag ez eus eur horv maro, ez a raktal di.

31. An Aotrou a gomzas c'hoaz ouz Job, hag a lavaras :

32. An hini a striv ouz Doue, hag eñ a dle ehana ker buan ? Evid gwir an hini a damall Doue, a dle responta dezañ.

33. Ha Job a respontas d'an Aotrou, hag a lavaras :

34. Pa em-eus komzet gand dievezded, petra a hellfen da responta ? Va dorn a likiin war va genou.

35. Eun dra em-eus lavaret, hag a garfen n'am-be ket lavaret : hag eun all c'hoaz, ha na livrin netra ken.

XL. Pennad.

Doue a gomz c'hoaz ouz Job.

1. Neuze an Aotrou a gomzas ouz Job euz a eur gorventenn, hag a lavaras /

2. Laka da houriz war da zargreiz evel eun den³¹⁹ : me a ray goulennou dit³²⁰, ha te a responto din.

³¹⁷ hel lakay da houriza : a lakaio eur gouriz war e houzoug.

³¹⁸ urherez : ? Ar vrezelidi o huchal.

³¹⁹ Laka da houriz war da zargreiz evel eun den : laka da houriz war da loanez, ha neuze e vi kreñv.

³²⁰ dit : diganit.

3. Ha te a fell dit kas da get va barn, ha va zamalloud, evid da zidamalloud da-unan ?
4. Ha bez' eh-eus-te eur vreh evel Doue, ha da vouez hag hi a ra kurun evel e hini ?
5. Laka sked war da dro, pign war eun tron uhel, bez leun a hloar, ha gwisk dillad euz ar re gaerra.
6. Dismantr ar re rog en da froudenn, hag izella gand eur sell ar re valh.
7. Sell ouz an oll re rog, ha diskar i, ha mah ar re fallagr en o leh.
8. Kuz i oll er poultr, ha taol o fenn er bez :
9. Ha me a anzavo penaoz da zorn dehou a hell da zavetei.
10. Setu Behemot³²¹ em-eus greet qanez, a zebr foenn evel eun ejenn.
11. E greñvder a zo en e zigroazell, hag e nerz e begel e gov.
12. Sevel a ra e lost evel eur wezenn-sedr, nervennou e zaougell a zo gweet an eil gand egile.
13. E eskern a zo evel kaniou³²² arem, hag e vigourn evel lammennou³²³ houarn.
14. Eñ eo ar penn euz a heñchou Doue ; an hini en-deus e hreet, a reno e gleze³²⁴.
15. Ar meneziou a zegas geot dezañ ; oll loened ar parkeier a hoari war e dro.
16. En disheol e kousk, e-touez ar raoz³²⁵, hag e lehiou leiz.
17. An disheol a holo e zisheol, hag haleg ar froud a zo war e dro.
18. Eva a ray eur ster, ha ne vezo ket souezet ; eñ a gredo zoken e hellfe redeg ar Jourdan en e henou.
19. Kemeret e vezo dre an daoulagad evel eur pesk gand eun higenn, ha toulet e vezo e zifronn gand eur peul.
20. Ha te a hello paka al Leviatan³²⁶ gand an higenn, hag erea e deod gand eur gordenn.
21. Lakaad a ri-te eur minouer ouz e fri, pe e toulli e garvan evid lakaad eul lagadenn ?
22. Hag eñ a bedo kaer ahanout, hag a lavaro dit komziousioul ?
23. Hag eñ a ray marhad ganez, ha te a zegemero anezañ da sklav da viken ?
24. Ha te a hoario gantañ evel gand eul labous, pe eh erei anezañ evid da vitizien³²⁷ ?
25. Lakaad a ri-te da vignoned d'e droha, hag ar varhadourien d'e zispenna a-dammou ?
26. Ha te a leunio ar rouejou gand e grohenn, ha kelorn ar pesked gand e benn ?
27. Laka da zorn warnezañ ; az-pezh koun euz ar brezel, ha na gomz mui.
28. Touellet e vezo en e hed, hag e vezo dsikaret dirag an oll.

XLI. Pennad.

³²¹ Behemot : dourvah.

³²² kaniou : korzennou.

³²³ lammennou : laonennou.

³²⁴ a reno e gleze : a roio eur hleze dezañ ;

³²⁵ ar raoz : ar raoskl.

³²⁶ Leviatan : gourglazard an Nil.

³²⁷ evid da vitizien : evid lakaad ar vitizien da haorzin.

Doue a gomz bepred ouz Job.

1. Na heg ket anezañ dre grizder ; rag piou a hell enebi ouz va dremm ?
2. Piou en-deus roet din da genta, evid ma tistaolin dezañ ? Kement a zo dindan an neñv a zo din.
3. Ne espernin ket anezañ, na nerz e heriou, na starder e bedennou.
4. Piou a roio da anaoud kohenn e wisk ? Ha piou a yelo e diabarz e henou ?
5. Piou a zigoro doriou e garvan ? Ema ar spont war-dro e zent.
6. E gorf a zo heñvel ouz tirennou arem teuz, goloet a skant stard an eil ouz egile³²⁸.
7. An eil a zo unanet gand egile, ha ne dremen ket zoken eun êzenn etrezo.
8. An eil a zo frammet gand egile ; en em zerhel a reont, heb ma heller o diframma.
9. Pa zeu da strevia, e taol skedou tan ; e zaoulagad a zo evel evel goulou tarz-an-deiz.
10. Euz e henou e teu kleuzeuriou, evel goulaouennou braz hag i beo.
11. Euz e zifronn e teu maged, evel euz a eur pod pa verv.
12. E alan a laka an tan da gregi er glaou, hag ar flamm a zeu er-mêz euz e henou.
13. En e houzoug e chom an nerz, hag an dienez a ya en e raog.
14. Izili e gorf a zo frammet an eil ouz egile ; ha pa gouezje ar gurun warnezañ, ne fiñvje ket euz e leh.
15. Kaled eo e galon evel ar mên ; en em starda a ra evel anneo eur gov.
16. Pa vezo savet, an êlez o-devezo aon, hag en o spont en em hlannaint.
17. Ar hleze a skoio gantañ na hello ket padoud, nag ar goaf, nag an harnez :
18. Rag eñ a zello an houarn evel eur holo³²⁹, hag an arem evel koad brein.
19. Ar gwareger n'hel kakay ket da dehoud, mein ar vatalm a dro evitañ e plouz.
20. Ar morzol a vezo evitañ evel eur blouzenn, hag eñ a ray goap euz ar goaf a vezo hejet dirazañ.
21. Didannañ e vezo bannou an heol, hag eñ a gerzo war an aour evel war ar fank.
22. Lakaad a ray an dorur da vervi er mor don evel evel en eur pod, heñvel hel lakay ouz eul lestrad traet hag a verv.
23. An hent a luho war e lerh, gwenn-kann e vezo al lonk da weloud.
24. N'eus galloud ebed war an douar a hellfe beza heñvel ouz e halloud, pa eo bet greet evid na zouje netra.
25. Kement a zo uhel a wel ; roue eo war oll vibien ar balhder.

XLII. Pennad.

En em izellaad a ra Job dirag an Aotrou. E varo.

1. Ha Job a respontas d'an Aotrou, hag a lavaras :

³²⁸ egile : ar re all.

³²⁹ evel eur holo : evel pa vefe kolo.

2. Me a oar penaoz e hellez pep tra, ha n'eus mennoz ebed kuzet dit.
3. Piou eo hennez, pehini a guz ar huzul heb gouiziegez ? Rag se em-eus komzet gand diezvezded, hag euz a draou a oa kalz dreist va gouiziegez.
4. Selaou, hag e komzin ; me a ray goulennou dit³³⁰, ha te, respont din.
5. Gand va skouarn em-boas da glevet, hogen bremañ az kwelan gand va lagad.
6. Rag se en em damallan va-unan, hag e ran pinijenn er poultr hag el ludu.
7. P'en-doe an Aotrou komzet en doare-ze ouz Job, e lavaras da Elifaz, an Temaniad : Savet eo va froudenn ouzit, hag ouz da zaou vignon, o veza n'hoh-eus ket komzet dirazon gand reizded, evel va zervijer Job.
8. Kemerit eta seiz taro, ha seiz tourh, hag it da gavoud va zervijer Job, ha kinnigit o³³¹ evidoh e sakrifis-losk ; hogen va zervijer Job a bedo evidoh : gand trugarez e sellin outañ, evid na vezo ket tamallet deoh an diboell-ze ; rag n'hoh-eus ket komzet dirazon gand reizded, evel va zervijer Job.
9. Elifaz, an Temaniad, ha Baldad, ar Suhiad, ha Sofar, an Naamatiad, a yeas eta, hag a reas evel m'en-doa an Aotrou lavaret dezo ; hag an Aotrou a zellas gand trugarez ouz Job.
10. An Aotrou a zistroas ivez ouz pinijenn Job, pa bede hemañ evid e vignoned : hag an Aotrou a zsistaolas da Job ar pez en-doa kent, daou gemend-all.
11. Hogen e oll vreudeur, hag e oll hoarezed, hag ar re oll o-doa e anavezet kent, a zeuas d'e gavoud, hag a zebras gantañ en e di ; hag i a ziskouezas an druez o-doa outañ, hag a zihlaharas anezañ euz an oll zroug en-doa degaset Doue dezañ : hag i a roas dezañ peb a zañvad, ha peb a lagadenn-skouarn aour.
12. An Aotrou a vennigas ivez Job en e stad diweza muioh eged en e stad kenta : rag eñ en-doe pevarzeg mil dañvad, ha c'hweh mil kañval, ha mlil koubl ejenned, ha mil azenez.
13. Bez' en-doe ivez seiz mab, ha teir merh.
14. Hag eñ a halvass an hini genta Deiz, hag an eil Kasia, hag an drede Kornustibi.
15. Rag ne oe ket kavet en douar oll merhed ker kaer ha merhed Job : hag o zad a roas dezo o lod en e zegouez, evel d'o breudeur.
16. Hogen Job a vevas goude-ze seiz-ugent vloaz ; hag eñ a welas e vibien, ha mibien e vibien beteg ar pevare rumm ; hag eñ a varvas koz-braz ha leun a zeiziou.

³³⁰ dit : diganit.

³³¹ o : anezo.

LEVR AR HRENNLAVARIOU

Pennad 1

Talvoudegez ar hrennlavariou.

1. Parabolennou Salomon, mab David, roue Izrael ;
 - 2 .Evid anaoud ar furnez, hag ar gelennadurez ;
 - 3 Evid poella geriou ar furnez, ha degemeroud kenteliou al lezenn, ar reizded, ar varn, hag an eeunder :
 - 4 Evid rei gwennded d'ar re abaf, gouiziegez ha poell d'ar re yaouank.
 - 5 An den fur o hlevo, hag a zeuio da veza furroh ; hag an den poelleg a zesko en em rena.
 - 6 Poella a ray ar barabolenn, hag an displeg anezi, geriou ar re fur, hag o lavariou-goloet.
 - 7 Doujañs an Aotrou eo penn kenta ar furnez. Ar re ziskiant a zispri ar furnez hag ar gelennadurez.
 - 8 Selaou, va mab, kenteliou da dad, ha na zistaol ket lezenn da vamm.
 - 9 Hag hi a vezo eur hinkl kaer d'az penn, ha kelhenn d'az kouzoug.`
 - 10 Va mab, mar deu ar beherien d'az likaoui, n'ez a ket d'o havoud.
 - 11 Ma leveront : Deus ganeom : en em lakaom e par evid skuilla ar gwad ; aozom spiou heb abeg a-eneb an den dinamm :
 - 12 Lonkom anezañ ez-veo evel an ivern, hag a-grenn evel an hini a ziskenn er poull.
 - 13 Ni a gavo a beb madou³³² talvouduz-braz ; ni a leunio on tiez gand diwiskou³³³ :
14. Taol ar sort ganeom, na vezet nemed eur yalh etrezom.
15. Va mab, na vale ket ganto ; na laka ket da droad en o raventchou.`
16. Rag o zreid a red etrezeg an droug, hag i a hast skuilla ar gwad.
17. Hogen en aner e taoler ar rouejou dirag ar re askelleg.
18. I ivez a aoz spiou a-eneb o gwad o-unan, hag a zav lindagou a-eneb o eneou.
19. Evel-se ema heñchou an oll re bervez ; skrapa a reont eneou ar re a ya d'o heul.
20. Ar furnez a brezeg er-mêz ; el leuriou-kêr e ro da glevoud he mouez.
21. E penn stolladou ar bobl e harm ; war harz perzier kêr e prezeg, o lavaroud :
22. Beetg pegeid, bugaligou, e karot-hu ar vugaleaj ? Beetg pegeid ar re ziskiant a hoantay ar pez a zo noazuz dezo, hag ar re ziboell a gasay ar ouiziegez ?
23. Distroit ouz va helenn : setu e skuillin va spered warnoh, hag e roin da glevoud deoh va homziou,

³³² a beb madou : a beb mad

³³³ diwiskou : preiz.

24. O veza ma em-eus galvet, ha n'hoh-eus ket va zelaouet : ma em-eus astennet va dorn, ha n'en-deus sellet ouzin ;

25. Ma hoh-eus disprizet va oll guzuliou, ha ma hoh-eus dilezet va helennou :

26. Me ivez a hoarzo pa varvot, hag a ray goap ahanoh, pa vezo c'hoarvezet ganeoh ar pezh ho-poa aon na zeuje.

27. Pa gouezo ar reuz en eun taol, pa zeuy ar maro evel eur gaouad arne ; pa zeuy warnoh an enkreuz hag an anken.

28. Neuze e halvint ahanon, ha ne zelaouin ket outo : mintin-mad e savint, ha n'am havint ket.

29. O veza ma o-deus kasaet ar gelennadurez, ha n'o-deus ket degemeret doujañs an Aotrou,

30. N'o-deus ket aotreet va huzuliou ha ma o-deus disprizet va oll gelennou.`

31. Rag se e tebrint frouez o hent, hag en em leuniit gand o huzuliou o-unan.

32. Diant ar vugaligou o lazo, hag eurvad ar re ziskiant o hollo.

33. Hogen an hini a zelaou ahanon, a arzavo hep spont ; hag en-devezo madou braz, heb aon rag an droug.

II. Pennad.

Talvoudegez ar furnez.

1. Va mab, mar selaouez va lavariou, ha mar kuzez va gourhemennou en da greiz,
2. En heveleb doare ma klevo da skouarn ar furnez ; izella da galon evid anaoud ar furnez.
3. Rag mar galvez ar furnez, ha mar izellaez da galon etrezeg ar poell ;
4. Mar klaskez anezi evel arhant, ha mar toullez evid he havoud evel eun teñzor :
5. Neuze eh anavezi doujañs an Aotrou, hag e kavi gouiziegez Doue ;
6. Rag an Aotrou eo a ra ar furnez ; hag euz e henou e teu ar poell hag ar ouiziegez.
7. Miroud a ra ar zilvidigez evid ar re eeun, hag e tivenno ar re a gerz en eeunder,
8. O viroud raventchou a reizded, hag oh heulia heñchou ar zent.
9. Neuze e poelli ar reizded, hag ar varn, hag an eeunder, ha pep ravent mad.
10. Ma'z a ar furnez en da galon, ha mar deo hetuz ar ouiziegez d'az ene ;
11. Ar huzul az tiwallo, hag ar poell az miro ;
12. Evid ma vezi dieubet diouz ar gwall hent, ha diouz an dud a wall-gomz ;
13. Pere a zilez an hent eeun, hag a vale etre strêjou teñval ;
14. Pere en em laouena pa o-deus greet droug, hag a drid en traou ar re falla ;
15. A bere an heñchou a zo saotret, hag ar hammejou a zo hudur,
16. Evid am vezi dieubet diouz ar wreg a-ziavêz, diouz an diavêziadez, pehini a zo ker kizidig en he homziou ;
17. Pehini a zilez rener he yaouankiz,
18. Hag a ankounac'ha kevredigez he Doue ; hag he zi a ya etrezeg ar maro, hag he raventchou etrezeg an ivern.
19. Piou bennag a ya d'he haoud, ne zistroy ket, ha na'z ay mui e heñchou ar vuhez.
20. Bale eta en hent mad ; ha mir raventchou ar re reiz.

21. Rag ar re eeun a galon a chomo war an douar, hag ar re reiz a vezo startaet warnezañ.
22. Hogen ar re fallagr a vezo tennet diwar an douar ; hag ar re zireiz a vezo lamet diwarnezañ.

III. Pennad.

Meuleudi ar furnez.

1. Va mab, na ankounac'ha ket va lezenn, ha ra viro da galon va gourhemennou.
2. Rag enno e kavi deiziou hir, kalz bloaveziou hag ar peoh.
3. Na zeuet ket an drugarez hag ar wirionez d'az tilezel : laka i evel eur gelhenn war-dro d'az kouzoug ; ha skriv i war taolennou da galon.
4. Hag e kavi gras hag eurvad dirag Doue ha dirag an dud.
5. Az-pezh fiziañs en Aotrou a-greiz kalon, ha n'en em harp ket war da furnez da-unan.
6. Laka da goun ennañ en da oll heñchou, hag eñ e-unan a reno da gammejou.
7. Na vez ket fur en da vennoz da-unan ; douj Doue, ha pella diouz an droug.
8. Evel-se e teuy ar yehed en da vegel, hag ar mel en da eskern.
9. Enor an Aotrou gand da vadou, ha ro dezañ ar previdi euz da oll frouez :
10. Ha da zolierou a vezo leun a ed, hag ar gwin a skuillo dreist ar gwaskellou.
11. Va mab, na zilez ket kelenn an Aotrou : ha na vez ket digalon pa gastiz ahanout.
12. Rag an Aotrou a gastiz neb a gar ; hag e laka e zudi ennañ evel eun tad en e vab.
13. Eüruz eo an den en-deus kavet ar furnez, hag en-deus eur poell braz.
14. Gwell eo gwerz ar furnez eged hini an arhant ; hag he frouez a zo gwelloh eged an aour ar glanna.
15. Talvoudusoh eo eged an oll vadou ; ha kement tra a heller da hoantaad ne hell ket talvezoud keit ha hi.
16. Hirder an deiziou a zo en he dorn dehou, hag en he dorn dorn kleiz ar madou hag ar hloar.
17. Heñchou kaer eo he heñchou, hag he raventchou a zo leun a beoh.
18. Eur wezenn a vuhez eo evid ar re a zalh anezi ; hag gwenvidig eo an hini en em stag outi.
19. An Aotrou en-deus diazezet an douar gand ar furnez, startaet en-deus an neñvou gand ar poell.
20. Gand e furnez eo bet dihlannet doureier al lonk, hag e teu ar hoabr, o stankaad, da ober ar gliz.
21. Va mab, n'az eet ket kement-se euz a zirag da zaoulagad : mir al lezenn hag ar huzul ;
22. Hag i a vezo buhez da ene, ha kinklerrez da houzoug.
23. Neuze e valei gand fiziañs en da hent, ha da droad n'en em stoko ket.
24. Mar kouskez, n'az-pezo ket a aon ; gourveza a ri, ha da gousk a vezo c'hwek.

25. Ne vezi ket spontet gand eur spont taer, na gand froudenn ar re fallagr mar kouez warnout.

26. Rag an Aotrou a vezo en da geñver, hag a ziwallo da droad evid na vezi ket paket.

27. Na vir ket na ray vad neb a hell e ober ; mar gellez e ober, gra vad ivez.

28. Na lavar ket d'az mignon : Kee, ha distro ; warhoaz e roin dit ; pa hellez rei raktal.

29. Na ra ket a zroug d'az mignon, pa laka e fiziañs ennout.

30. Na striv ket ouz eun den heb abeg, pa n'en-deus greet droug ebed dit.

31. Na striv ket ouz eun den direiz, ha na heul ket e heñchou.

32. Rag argaruz eo an oll douellerien dirag an Aotrou ; ha na ro da anaoud da lavariou kuzet nemed d'ar re eeun.

33. An Aotrou a gaso an dienez e ti an den fallagr : hogen tiez an dud reiz a vennigo.

34. Eñ a ray goap euz ar hoapaerien, hag a roio e hras d'ar re habask.

35. Ar hloar a vezo perz ar re fur ; hag an dismegañs eo lod ar re ziboell.

IV. Pennad.

Eurvad ar re reiz. Gwalleur ar re zroug.

1. Selaout, va mibien, kelenn ho tad, ha likit evez evid ma teskot ar poell.

2. Eun dra vad a roin deoh ; na zilezit ket va lezenn.

3. Rag me a zo bet eur mab karet mad gand va zad, hag evel eur mab pennher dirag va mamm.

4. Hag eñ a zeske ahanon, hag a lavare din : Ra zegemero da galon va geriou ; mir va helennou, hag e vevi.

5. Laka da boan evid kaoud ar furnez, evid kaoud ar poell ; na ankounac'ha ket geriou va genou, ha na zistro ket diouto.

6. Na zilez ket ar furnez, hag hi az tiwallo ; kar hi, hag hi az miro.

7. Penn kenta ar furnez, eo lakaad he foan evid kaoud ar furnez ; hag e kement eh-eus, pren ar poell.

8. Tiz hi, hag hi az savo ; da enori a ray, mar briatez anezi.

9. Rei a ray d'az penn eur hresk a hrasou, hag eur gurunenn skeduz a zivenno ahanout.

10. Selaou, va mab, ha degemer va homziou, evid ma kresko bloaveziou da vuhez.

11. Diskoueza a rin dit hent ar furnez ; da gas a rin dre raventchou an eeunder.

12. Pa vezi eet enno, da gammejou ne vezint ket strisaet ; mar redez, na gouezi ket.

13. Dalh ar helenn, na zilez ket anezañ ; mir eñ, rag da vuhez eo.

14. Na gemer ket a zudi e raventchou ar re fallagr, ha na vezet ket hetuz dit hent ar re zroug.

15. Teh eñ, na dremen ket drezañ : distro diwarnezañ ha kee e-biou.

16. Rag ne gouskont ket nemed droug o-defe greet ; hag ar housk a gollont, ma n'o-deus ket diskaret eur re bennag.

17. Debri a reont bara ar fallagriez, hag eva a reont gwin an drougiez.

18. Hogen ravent ar re reiz a luh evel eur houlaouenn ; a-raog ez a hag e kresk beteg an deiz klok.

19. Hent ar re fallagr a zo teñval ; ne ouzont ket peleh e kouezont.

20. Va mab, selaou va geriou ; pleg da skouarn etrezeg va lavariou.

21. Na bellaent ket diouz da zaoulagad : mir-i e-kreiz da galon.

22. Rag buhez int evid ar re o hav, ha yehed evid pep kig.

23. Gand kalz breder mir da galon, rag diouti eo e teuy ar vuhez.

24. Distaol diouti ar gwall heriou, ha pella ar muzellou labennuz.

25. Ra zello eeun da zaoulagad ; ha ra'z ay krohenn da lagad a-raog da gammejou.

26. Kompez an hent dindan da dreid, ha da dreid a vezo stard.

27. Na dro ket nag a-zehou nag a-gleiz ; tenn da droad euz an droug ; rag an Aotrou a anavez an heñchou a zo a-zehou : hogen gwall heñchou eo ar re a zo a-gleiz. Eñ e-unan eo a lakay da gerzed da veza eeun, hag az reno e peoh en da hent.

V. Pennad.

Karoud e wreg ha tehoud diouz ar re all.

1. Va mab, laka evez ouz va furnez, ha pleg da skouarn etrezeg va foell :

2. Evid ma tiwalli da vennoziou, ha ma viro ar helenn da vuzellou. N'en em ro ket da douellerezou ar wreg.

3. Rag muzellou ar wreg fall a zo evel eun direnn vel ; hag he gargadenn a zo c'hwekoh eged an eoul.

4. Hogen an diwez anezi a zo c'hwero evel an huelenn hwero, ha lemm evel eur hleze diou-zremm.

5. He zreid a ziskenn er maro, hag he hammejou a zank en ivernou.

6. Ne valeont ket dre ravent ar vuhez : kildroug ha didreuzuz eo o hammejou.

7. Bremañ eta, va mab, selaou ahanon, ha na zistro ket diouz geriou va genou.

8. Pella diouti da hent, ha na dosta ket ouz dor he zi.

9. Na ro ket da enor d'an diavêzidi, na da vloaveziou d'an den kriz.

10. Gand aon n'en em gargfe an diavêzidi gand da vadou, ha na'z aje da labouriou e ti eun all.

11. Ha na geinfes en diwez, pa'z-pezo displeberet da gig ha da gorg, o lavaroud :

12. Perag em-eus-me argarzet ar helenn, ha n'he-deus ket va halon en em roet d'ar henteliou a zo bet roet din ?

13. Perag n'em-eus-me ket selaouet mouez ar re a zeske ahanon, ha n'em-eus-me ket roet skouarn d'am mistri ?

14. Demzoubet on bet e pep droug, e-kreiz ar strollad hag ar bagad tud.

15. Ev dour euz da buñs da-unan, hag euz a houeriou da feunteun :

16. Ra darzo er-mêz goueriou da feunteun ; laka da redeg da zoureier el leuriou kêr.

17. Ra vezint dit da-unan, ha n'o-defet ket an diavêzidi o lod enno.

18. Ra vezo benniget da feunteun, hag en em laouenna gand gwreg da yaouankiz.

19. Bezet evel eun heizez karet-meurbed, evel eur harvig karet-braz. Ra vezi bepred gand he bronnou ; ha ra vezo he harantez da zudi e peb amzer.

20. Perag, va mab, e vezi-te touellet gand eur wreg a-ziavêz hag ez i-te d'en em domma war askre eun all ?

21. An Aotrou a zell ouz heñchou an den ; gweloud a ra e oll gammejou.

22. An den fallagr a zo paket en e fallagriez e-unan, ha gand ereou e behejou eo ereet.

23. Eñ a varvo, o veza n'en-deus ket degemeret ar heleñn, hag e vezo touellet gand e follentez vraz.

VI. Pennad.

Tehoud diouz al leziregez.

1. Va mab, ma eh-eus kreteet evid da vignon ; ma eh-eus tonket e dorn eun diavêziad,

2. Ouz en em lakaet er rouejou greet gand geriou da henou, hag out paket gand da lavariou da-unan.

3. Gra eta, va mab, ar pezh a lavaran, hag en em zieub da-unan : rag kouezet out etre daouarn da nesa. Red a bep tu, hast afo, ha dihun da vignon.

4. Arabad eo dit lezel da zaoulagad da gousked : divored malvennou da zaoulagad.

5. Teh evel eur yourh euz a zorn ar gwenaer, hag evel eul labous euz a zorn al labouseter.

6. Kee etrezeg ar verienenn, o ! den lezireg, hag evesa ouz he heñchou, ha desk ar furnez :

7. Petra bennag n'he-deus-hi na dug, na kelenner, na priñs,

8. E tastum he boued a-zoug an hañv, hag e tastum e mare ar mederez peadra da zebri.

9. Beteg pegeid, den lezireg, e kouski-te ? Peur e tihuni-te euz da gousk ?

10. Eun nebeud e kouski, eun nebeud e voredi, eun nebeud e liki da zaouarn an eil war egile, evid dsikuiza.

11. Hag an davantegez a zeuio warnout evel eur herzer³³⁴, hag ar baourentez evel eun den armet. Hogen mar dout aketuz, evel eur feunteun, e vezo fonnuz da eost, hag an davantegez a deho pell diouzit.

12. An den difeiz a zo eun den didalvez ; gand eur genou fallagr ez a.

13. Aroueziou a ra gand e zaoulagad, skei a ra gand e droad, komza a ra gand e vizied.

14. Gand eur wall galon eh aoz an droug, hag e peb amzer eh had ar strivou.

15. En eun taol ez ay da goll, raktal e vezo brevet, ha ne gavo louzou ebed ouz e boan.

16. C'hweh tra 'zo hag a gasa an Aotrou, hag eur seizved a argarz e ene.

17. Daoulagad balh, an teod gaouiad, daouarn a skuill gwad dinamm,

18. Ar galon a aoz gwall vennoziou, an treid skañv evid redeg etrezeg an droug,

19. An test fall a lavar gevier, hag an hini a had strivou e-touez e vreudeur.

20. Mir, va mab, kenteliou da dad, ha na zilez ket lezenn da vamm.

21. Dalh i³³⁵ bepred en da galon, ha doug i en-dro d'az kouzoug.

³³⁴ eur herzer : eur hantreer.

22. Pa valeez, ra gerzint ganez ; pa gouskez, ra ziwallint ahanout ; pa vezi dihun, komz outo.

23. Rag ar gourhemennou a zo eur hleuzeur, hag al lezenn eur houlaouenn, ha kroez ar helenn a zo hent ar vuhez ;

24. Evid ma virint ahanout diouz ar gwall vaouez, ha diouz teod likaouïz an deviêzadez.

25. Na vezet ket touellet da galon gand he haerded, ha na vezet ket paket gand he sellou.

26. Rag eur plah fall na dalv ket a-walh eur bara hepken : hogen ar vaouez a zalh e sklaverez ene ar gwaz pehini a zo talvouduz-braz.

27. Hag eun den a hell kuza an tan en e askre, heb ma krog en e zillad ?

28. Pe hag-eñ a hell kerzoud war ar glaou, heb ma ve devet kalon e dreid ?

29. Evel-se neb a yelo da gaoud gwreg e nesa, ne vezo ket glan pa en-devezo stoket outi.

30. N'eo ket braz an droug a ra eun den a laer evid kaoud peadra da zebri, pa en-deus naon :

31. Mar bez paket e tistaolo seiz gwech kemend-all, hag e roio kement a zo en e di.

32. Hogen an hini a zo avoultr, a goll e ene en abeg da ziroll e galon.

33. Tenna a ra warnezañ ar vez hag ar vezegez ; hg e zismegañs ne vezo ket lamet.

34. Rag oaz ha froudou an ozah 'zo kollet e enor, n'en-devezo trugarez ebed e deiz ar veñjañs.

35. Ne zelaouo fedenn³³⁶ ebed, ha ne zegemero netra evid en em zigolla.

VII. Pennad.

Tehoud diouz lidou ar plahed fall.

1. Va mab, mir va geriou, ha dastum va gourhemennou ennout ;

2. Seven, va mab, va gourhemennou, hag e vevi ; mir va lezenn evel mab da lagad.

3. Stag i ouz da vizied, ha skriv i war taolennou da galon.

4. Lavar d'ar furnez : Va hoar out ; ha galv poell da vignon.

5. Evid ma viro ahanout diouz ar wreg a-ziavêz, diouz an diavêdez, a gomz en eun doare likaouïz.

6. Rag pa emeon ouz prenest va zi, ha pa zellan a-dreuz d'ar sparlou,

7. E welan tud diroll, hag e welan eun den yaouank diboell,

8. Pehini a dremen en eur ru e korn he zi, hag a gerz en hent a ya di,

9. En amhoulou, war ar pardez, pa eo deuet an noz da veza du ha teñval.

10. Ha setu e teu d'e ziambrouga eur vaouez kinklet e doare eur plah fall dare da baka an eneou, teodegez, ha rederez,

11. Pehini ne hell ket ehana, na lakaad he zreid da chom en he zi,

12. Pehini a aoz he spiou er-mêz, el leuriou-kêr, e korn ar ruou.

³³⁵ i : aliou e vamm.

³³⁶ fedenn : Vi-koukoug ? = pedenn. Pe "fedenn" = "c'hwedenn" (?)

13. Hi a grog en den yaouank-se hag a bok dezañ : hag, heb mez ebed, e lid anezañ, o lavaroud :

14. Viktimou em-oa gouestlet evid va zilvidigez ; hirio em-eus sevenet va gouestl.

15. Rag se on deuet d'az tiambrouga, gand ar c'hoant d'az kweloud, hag em-eus da gavet.

16. Stegnet em-eus va gwele, hag em-eus e holoet gand pallennou livet euz an Ejipt.

17. Sparfet em-eus va gwele gand mirr, aloez ha sinamon.

18. Deus, kemerom on dudi, ha piaouom ar pez on-eus c'hoantaet, ken na darzo an deiz.

19. Rag n'ema ket va ozah er gêr ; eet eo en hent evid pell.

20. Eur zah³³⁷ arhant en-deus kaset gantañ ; da zeiz ar hann-loar e tistroio d'ar gêr.

21. Evel-se e taol he rouejou warnezañ gand kalz lavariou, hag e tenn anezañ gand lidou he muzellou.

22. Raktal ez a war he lerh evel eun ejenn a gaser d'ar maro, hag evel eun oan a lamm ; ha ne oar ket, den diskiant ma'z eo, penaoz her haser d'an ereou,

23. Ken na vezo toullet e avu gand eur zaez ; evel ma'z afe buan eul labous etrezeg ar rouejou, heb gouzoud penaoz e red d'ar maro.

24. Bremañ eta, va mab, selaou ahanon, ha laka evez ouz geriou va genou.

25. Na vezet ket tennet da galon en he heñchou, ha na fazi ket en he raventchou.

26. Hag eul lod braz a dud a zo bet gloazet ha diskaret ganti ; hag ar re greñv he-deus lazet.

27. Hent an ivern eo he zi ; beteg donder ar maro ez a.

VIII. Pennad.

Ar furnez a zo e Doue a beb amzer.

1. Ha ne harm ket ar furnez, ha ne ro ket ar poell he mouez ?

2. Ema a-hed an hent war lein al lehiou ar re uhella ; e-kreiz ar raventchou en em zalh ;

3. War harz perzier kêr, e-tal an doriou, e komz, o lavaroud :

4. O ! tud, etrezeg ennoh e harman, etrezeg bugale an dud ez a va mouez.

5. C'hwi, tud diboell, deskit ar gwennded³³⁸, ha c'hwi, tud diskiant, likit evez.

6. Selaouit, rag euz a draou braz e komzin : ha va muzellou a zigoro evid rei da anaoud traou eeun.

7. Va genou a boellado ar wirionez, ha va muzellou a argarzo an den fallagr.

8. Reiz eo va oll gomziou ; n'eus enno netra a ve droug na saotret.

9. Eeun int evid ar re a zo poelleg, ha reiz evid ar re o-deus kavet ar wirionez.

10. Degemerit va helenn, ha nann³³⁹ an arhant : dilennit kentoh ar gelennadurez eged an dour.

³³⁷ Eur zah : euz zahad.

³³⁸ ar gwennded : ar poell.

³³⁹ nann : galleg.

11. Rag gwell eo ar furnez eged an traou ar re dalvoudusa : ha kement a hoantaer ne hell ket beza lakaet keit hag hi.
12. Me ‘zo ar furnez, hag e choman er huzul, hag en em gavan e-kreiz ar mennoziou skiantuz.
13. Doujañs an Aotrou he-deus kas ouz an droug ; me a argarz ar rogoni, hag ar balhder, hag an hent saotr, hag an teod daou-lavar.
14. Ennon ema ar huzul hag an eeunder, ennon ema ar poell hag an nerz.
15. Drezon eo e ren ar roueed, hag e ro al lizerennerien lezennou reiz.
16. Drezon e hourhemenn ar briñsed, hag e varn ar re halloudeg.
17. Me a gar ar re am har ; hag ar re a veill diouz ar mintin evid va hlaskoud, am havo.
18. Ganen ema ar madou hag ar hloar, ar veurded, hag ar reizded.
19. Rag gwell eo va frouez eged aour ha mein talvouduz-braz ; hag ar pezh a zeu ahanon, eged arhant ar glanna.
20. E heñchou ar reizded e valean, e-kreiz raventchou ar varn ;
21. Evid pinvidikaad ar re am har, hag evid leunia o zeñzoriou.
22. An Aotrou en-deus bet³⁴⁰ ahanon e derou e heñchou, a-barz³⁴¹ ma reas netra er penn kenta.
23. A-viskoaz on bet lakaet, adaleg an derou, a-barz na oa greet an douar.
24. N’edo ket c’hoaz ar poullou braz, ha me a oa engehentet : ne oa ket c’hoaz tarzet ar feunteuniou dour.
25. Ne oa ket c’hoaz greet ar menezioù ponner ; a-barz ar hrehiennou e oan ganet.
26. N’en-doa ket c’hoaz greet an douar, nag ar steriou, nag aeliou³⁴² ar bed.
27. Pa aoze an neñvou, edon eno ; pa lakae eur helh war-dro d’ar poullou don, ha pa roe eul lezenn dezo :
28. Pa startae an êr a-zioh, ha pa lakae da veza kevatal ar feunteuniou dour :
29. Pa zerre ar mor en e vevenn, ha pa lakae eul lezenn d’an doureier, evid na’z agent ket e-biou d’o harzou ; pa lakae diazezou an douar :
30. Gantañ edon o reiza pep tra ; edon en dudi bemdez, hag en em laouennen bepred dirazañ.
31. Hag en em laouennen er bed ; hag e kaven va dudi o veza gand bugale an dud.
32. Bremañ eta, va mibien, selaouit ahanon ; eüruz eo ar re a vir va heñchou.
33. Klevit va helenn, ha bezit fur, ha na zistaolit ket anezañ.
34. Eüruz eo an den a zelaou ahanon, hag a veill bemdez ouz va dor, hag a evesa e-tal he fostou.
35. Neb en-devezo va havet, a gavo ar vuhez, hag a buñso ar zilvidigez digand an Aotrou.
36. Hogen neb a beho em eneb, a hloazo e ene e-unan. Kement hini en-deus kas ouzin, a gar ar maro.

IX. Pennad.

³⁴⁰ bet : krouet.

³⁴¹ a-barz : abaoe.

³⁴² aeliou : ? Marteze “aveliou“

An den reiz a zelaou ; ar re fallagr a ra goap.

1. Ar furnez he-deus savet eun ti eviti, seiz peulvan he-deus benet.
2. Lazet he-deus he loened, mesket he-deus he gwin, hag aozet he-deus he zaol.
3. Kaset he-deus he mitizien evid gervel an dud diwar ar hreh, ha diwar muriou kêr :
4. Piou bennag a zo eeun, deuet d'am havoud. Ha d'ar re ziskiant he-desus lavaret :
5. Deuit, debrit va bara, hag evit ar gwin em-eus mesket evidoh.
6. Dilezit ar bugaleaj, ha bevit, ha baleit e heñchou ar furnez.
7. Neb a zesk ar goapaer a ra dismegañs dezañ e-unan ; ha neb a gelenn ar re fallagr, a gas dizenor warnezañ e-unan.
8. Na gelenn ket ar goapaer, gand aon na zeufe da gasaad ahanoud ; kelenn an den fur, hag e karo ahanout.
9. Ro an dro³⁴³ d'an den fur, hag e teuio da veza furroh. Desk an den reiz, hag eñ a hasto deski.
10. Penn kenta ar furnez eo doujañs an Aotrou ; ha gouiziegez ar zent eo ar poell.
11. Rag ganen eo e vezo kresket da zeiziou, hag e vezo kresket bloaveziou da vuhez.
12. Mar dout fur, e vezi fur evidout da-unan ; hogen mar dout eur goapaer, dougen a ri ar boan da-unan.
13. Ar wreg diskiant ha krozer, leun a hened, ha diouzieg e pep tra,
14. A zo azezet e-tal dor he zi war eur gador en eul leh uhel euz a gêr ;
15. Evid gervel ar re a ya e-biou, hag a gerz en o hent :
16. Neb a zo eeun, troet etrezeg ennon. Ha d'an den dsikiant he-deus lavaret :
17. An doureier laeret eo ar re hweka, hag ar bara debret e kuz eo ar gwella.
18. Hogen eñ ne oar ket penaoz al langouineien a zo eno, ha penaoz ar re a zebr ouz he zaol a zo e goueled an ivern.

Parabolenn Salomon

X. Pennad.

An reiz hag an den fallagr.

1. Ar mab fur a laouena e dad ; hag ar mab foll a drista e vamm.
2. Teñzoriou ar fallagriez ne dalvezint netra ; hogen ar reizded a zieubo euz ar maro.
3. Ne reustlo ket an Aotrou gand an naon ene an den reiz, hag e tispennou spiou ar re fallagr.
4. Dorn ar re laosk a zegas an dienez ; hogen dorn ar re greñv a zastum madou. Neb a harp war ar gevier en em vag gand avel ; redeg a ra ivez war-lerh al laboused a nij.

³⁴³ an dro : ?

5. Neb a zastum ar mederez a zo eur mab fur : hogen neb a gousk a-zoug an hañv a zo eur mab a vezegez.
6. Bennoz an Aotrou a zo war penn an den reiz ; hogen an droug a holo penn ar re fallagr.
7. Eñvor an den reiz a vezo meulet ; hag ano an den fallagr a vreino.
8. Neb a zo fur a galon a zegemer ar hemennou ; an den diskiant a zo skoet gand ar muzellou³⁴⁴.
9. Neb a vale gand eeunder a vale gand fiziañs ; hogen neb a zireiz e heñchou a vezo dizoloet.
10. Neb a ra aroueziou gand e lagad en-devezo poan ; hag an den diskiant a vezo skoet gand ar muzellou.
11. Eur wazienn a vuhez eo genou an den reiz ; ha genou ar re fallagr a holo an droug.
12. Ar gasoni a laka da zevel ar strivou ; hag ar garanetz a holo peb gwall.
13. War muzellou an den fur e kaver ar furnez ; hag ar wialenn war gein an hini a zo diskiant.
14. Ar re fur a guz o gouiziegez ; hogen genou an den diskiant a zo tost d'ar vezegez.
15. Danvez an den pinvidig eo e gêr greñv ; dienez ar paour eo e zoujañs.
16. Labour an den reiz a ya d'ar vuhez ; hogen frouez an den fallagr a ya d'ar pehed.
17. Mirerez ar helenn eo hent ar vuhez ; hogen neb a zilez ar hrozou a fazi.
18. Ar muzellou gaouiad a guz ar gasoni ; neb a gunuh a zo eun den diskiant.
19. Al lavariou hir ne vezint ket diveh a behed ; hogen neb a zo habask e gomziou a zo fur-braz.
20. Teod an den reiz a zo evel arhant dilastez ; hogen kalon an dud fallagr a zo didalvez.
21. Muzellou an den reiz a zesk eul lod braz a dud ; hogen ar re ziskiant a varvo e dienez o halon.
22. Bennoz an Aotrou a ra an dud pinvidig ; hag ar hlahar n'he-devezo ket he lod ganto.
23. Evel en eur hoarzin, an den diskiant a zo an droug ; hogen ar furnez eo poell an den.
24. Ar pez en-deus aon an den fallagr a hoarvezo gantañ ; ar pez a hoanta ar re reiz a vezo roet dezo.
25. An den fallagr a yelo e-biou evel eun arne a dremen ; hogen an den reiz a vezo evel eun diazez peurbaduz.
26. Evel ma eo ar gwinegr d'an dent, hag ar moped d'an daoulagad, evel-se ema an den dieg e-keñver ar re o-deus e gaset.
27. Doujañs an Aotrou a astenn an deiziou ; ha bloaveziou ar re fallagr a vezo berraet.
28. Gortoz ar re reiz eo al levenez ; hogen ged ar re fallagr a yelo da get.
29. Hent an Aotrou a zo nerz an den eeun ; hag ar spont a zo evid ar re a ra an droug.
30. An den reiz ne vezo biken keflusket ; hogen ar re fallagr ne chomint ket war an douar.
31. Genou an den reiz a hano ar furnez ; teod ar gwall zud a yelo da get.

³⁴⁴ an den diskiant a zo skoet gand ar muzellou : ?

32. Muzellou an den reiz a arvest traou hetuz ; ha genou ar re fallagr traou fall.

XI. Pennad.

Gounidou an den reiz, poaniou an den direiz.

1. Ar valañs touelluz a zo argaruz dirag an Aotrou ; hag ar pouez reiz a zo hetuz d'e youl.
2. El leh ma vezo ar rogentez, eno e vezo ivez an dismegañs ; hogen el leh ma ema an uvelded, eno ema ivez ar furnez.
3. Eeunder ar re reiz a reno anezo ; ha touellerez ar re zireiz a gollo anezo.
4. Ar madou ne dalvezint netra e deiz ar varn ; hogen ar reizded a denno euz ar maro.
5. Reizded an den eeun a reiz e hent ; gand e fallagriez e kouezo ar fallagr.
6. Reizded ar re reiz a zieubo anezo ; hag ar re fallagr a vezo paket en o spiou o-unan.
7. Pa vezo maro an den fallagr, ne chomo mui ged ebed ; ha gortoz ar fougeerien a vezo kollet.
8. An den reiz a zo bet dieubet euz an anken ; hag an den fallagr a vezo roet en e leh.
9. An den kuzet a douell e vignon gand e henou ; ar re reiz a vezo dieubet gand ar ouiziegez.
10. Eurvad ar re reiz a lakay kêr da drida ; ha pa vezo kollet ar re fallagr, e vezo meuleudi.
11. Gand bennoz ar re reiz e vezo uhellaet kêr ; ha gand genou ar re fallagr e vezo diskaret.
12. Neb a zispriz e vignon a zo digalon ; hogen an den fur a davo.
13. Neb a vale en douellerez a ziskuill an traou kuzet ; hogen neb a zo feal e galon, a guz ar pezh en-deus lavaret e vignon dezañ.
14. El leh n'eus ket a rener, e teu ar bobl da zizeria ; hogen el leh ma'z eus kalz a guzuliou, eno ema ar zilvidigez.
15. Reuzeudig e vezo neb a greta evid eun den a-ziavêz ; hogen neb a deho diouz ar spiou a vezo e diwall.
16. Ar wreg deread a gavo ar hloar ; hag ar re greñv o-devezo ar madou.
17. An den trugareg a ra vad d'e ene e-unan ; hogen an hini a zo kriz a zistaol e gerent o-unan.
18. An den fallagr a ra eul labour ne deo ket stard ; hogen eur gwir hobr a zo evid an hini a had ar reizded.
19. An habasketed a aoz hent ar vuhez ; hag enklask an droug a gas d'ar maro.
20. Eur galon droidelluz a zo argaruz d'an Aotrou ; hogen lakaad a ra e zudi er re a vale en eeunder.
21. Ar gwall zen ne vezo ket dinamm, ha p'en-defe e zaouarn an eil en egile³⁴⁵ ; hogen gouenn ar re reiz a vezo dieubet.
22. Evel eul lagadenn aour ouz fri euz wiz, eo eur wreg kaer hag hi fougeerez.
23. Youl ar re reiz eo peb mad ; gortoz ar re fallagr eo an diboell.

³⁴⁵ ha p'en-defe e zaouarn an eil en egile : ? e zaou zorn... ?

24. Lod a ro ar pezh a zo dezo, hag a zo pinvidig bepred ; lod all a skrap ar pezh n'eo ket dezo, hag a zo paour evel a-gent.

25. An hini a ro kalz, a vezo larteet ; an hini a ro e walh en-devezo e walh ivez.

26. Neb a guz an ed a vezo milliget gand ar poblou ; hogen ar vennoz a zeuio war penn ar re e werzo.

27. Neb a galsk ar mad, a ra ervad sevel diouz ar mintin ; hogen neb a glask an droug a vezo gwasket gantañ.

28. Neb a laka e fiziañs en e vadou, a vezo diskaret, hogen ar re reiz a gellido evel an delienn hlaz.

29. An hini a gas droug en e di n'en-devezo nemed avel ; ha neb a zo diskiant a vezo servijer an den fur.

30. Frouez an den reiz eo ar wezenn a vuhez ; ha neb a zegemer an eneoù a zo fur.

31. Mar deo kastizet an den reiz war an douar, pegement ouspenn an den fallagr hag ar peher ?

XII.Pennad.

An den aketuz hag an den lezireg ; an den gwirion hag ar gaouiad.

1. Neb a gar ar helenn, a gar ar ouiziegezh ; hogen neb a gasa an tamallou, a zo eun den diskiant.

2. Neb a zo mad a gavo gras dirag an Aotrou ; hogen neb a laka e fiziañs en e vennoziou e-unan, a ra evel ma ra eun den fallagr.

3. An den ne startay ket gand ar fallagriez ; ha gwirzienn ar re reiz ne vezo ket keflusket.

4. Ar wreg aketuz eo kurunenn heh ozah ; hag an hini a ra traou mezuz a zo eur vreinadurez en heh eskern.

5. Mennoziou ar re reiz a zo barniou ; ha kuzulioù ar re fallagr a zo touellereziou.

6. Komziou ar re fallagr a aoz spiou d'ar gwad³⁴⁶ ; ar re vad a vezo tennet a boan gand o genou o-unan.

7. Tro ar re fallagr³⁴⁷, ha ne vezint mui ; hogen ti ar re reiz a bado.

8. Diouz e gelennadurez e vezo anavezet an den ; hogen an hini a zo didalvez ha diskiant a gouezo er vezegezh.

9. An den paour en-deus a-walh gand ar pezh en-deus, a zo gwelloc'h eged eur fougeer ha n'en-deus ket a vara.

10. An den reiz a laka e breder e buhez e loened ; hogen kalon ar re fallagr a zo kriz.

11. Neb a labour e zouar, en-devezo e walh a vara ; hogen neb a gar al leziregezh a zo diskiant-braz. Neb a dremen e amzer oh eva gwin gand dudi, a lez ar vezegezh en e diegezh.

12. Youl an den fallagr eo en em harpa war ar gwall zud ; hogen gwirzienn ar re reiz a eginno muioc'h-mui.

³⁴⁶ Komziou ar re fallagr a aoz spiou d'ar gwad : gand o homziou e vez skuillet ar gwad.

³⁴⁷ Tro ar re fallagr : distroet, ar re fallagr..

13. En abeg da behejou e vuzellou e vezo dispennet an den fallagr ; hogen an den reiz a deho diouz an anken.

14. Hervez frouez e henou e vezo leuniet pep hini a vadou, hag hervez oberiou e zaouarn e vezo roet dezañ.

15. Hent an den diskiant a zo eeun dirag e zaoulagad e-unan ; hogen an hini a zo fur a zelaou an aliou.

16. An den diboell a ziskouez raktal e vuanegez ; hogen neb a guz an dismegañs a zo eun den gwenn³⁴⁸.

17. Neb a lavar ar peza a oar a zo eun test reiz ; hogen neb a lavar gevier a zo eun test gaou.

18. Lod a ro o ger, hag a zo toullet gand o houstiañs evel gand eur hleze ; hogen teod ar re fur a zo yehed.

19. Muzell ar wirionez a vezo stard da viken ; hogen an test taer a aoz eun teod a hevier.

20. An douellerez a zo e kalon ar re a venn droug ; hogen ar re n'o-deus nemed aliou a beoh a vezo el levenez.

21. Petra bennag a hoarvezo gand an den reiz, ne vezo ket doaniet ; hogen ar re fallagr a vezo leun a reh.

22. Ar muzellou gaouiad a zo argaruz d'an Aotrou ; hogen ar re a ya gand fealded a zo hetuz dezañ.

23. An den fur a guz e ouiziegez ; ha kalon ar re ziskiant a ziskouez o diboell.

24. Dorn ar re greñv a aotrounio ; hogen an dorn laosk a vezo aotrouniet.

25. Doan e kalon eun den a uvellaio anaezañ, hag eur ger mad hel laouennaio.

26. Neb a zilez eur gaou en abeg d'e vignon, a zo reiz ; hogen hent ar re fallagr a douello anezo.

27. An toueller ne gavo ket a hounid ; ha danvez an den reiz a vezo ken talvouduz hag an aour.

28. E ravent ar reizded ema ar vuhez ; hogen an hent distro a gas d'ar maro.

XIII. Pennad.

Ar gwir vadou.

1. Ar mab fur a zelaou kelennadurez e dad ; hogen ar goapaer ne zelaou ket pa grozer anezañ.

2. Gand frouez e henou e vezo an den leuniet a vadou ; hogen ene ar re fallagr a zo direiz.

3. Neb a vir e henou, a vir e ene ; hoigen neb a zo dievez en e gomziou, a houzañvo poaniou.

4. An den dieg a hoanta hag ne hoanta ket ; hogen ene ar re a labour en em lardo.

5. An den reiz a argarzo ar gevier ; hogen an den fallagr a vezeka, hag a vezo mezekaet.

6. Ar reizded a vir hent an den dinamm, hogen ar fallagriez a laka ar peher da goueza.

³⁴⁸ gwenn : evezieg.

7. Hemañ, war a greder, a zo pinvidig, pa n'en-deus netra ; hennez, war a greder, a zo paour, pa eo pinvidig-braz.

8. An den pinvidig a zaspren e vuhez gand e vadou ; hogen an hini a zo paour ne houzañv ket a hourdrouz.

9. Goulou ar re reiz a laouena ; hogen kleuzeur ar re fallagr a vezo mouget.

10. Gand ar re rog ez eus strivou bepred ; hogen ar re a ra pep tra gand kuzul, a zo renet gand ar furnez.

11. Ar madou dastumet buan a zigresko, hogen ar re a vezo dastumet gand an dorn a-nebeud e-nebeud, a gresko.

12. Ar ged a zale da zond a hlahar an ene ; ar c'hoant a zeu da vad a zo eur wezenn a vuhez.

13. Neb a gomz euz a eun dra gand fae, en em engouestl evid an amzer da zond ; hogen neb a zouj ar gourhemenn, a chomo e peoh. An eneou touelluz a fazi er pehejou ; hogen ar re reiz a zo trugarezuz, hag a ra trugarez.

14. Lezenn an den fur a zo eur feunteun a vuhez, evid pellaad diouz dismantr ar maro.

15. Ar gelennadurez vad a roy ar hras ; hent ar hoaperien a gas d'al lonk.

16. An den fur a ra pep tra gand kuzul ; hogen an den diskiant a ziskouez e follentez.

17. Kannad an den fallagr a gouezo en droug ; hogen ar hannad feal a zo yehed.

18. Dienez ha mezegez a vezo d'an hini a zilezo ar gelennadurez ; hogen neb a aotre ar hroz, a vezo enoret-braz.

19. Sevedigez ar c'hoant a zo dudi an ene ; an dud diboell a argarz ar re a deh diouz an droug.

20. Neb a gerz gand ar re fur, a vezo fur ; mignon ar re ziboell a vezo heñvel outo.

21. An droug a heul ar beherien ; hag ar madou a vezo roet d'ar re reiz.

22. An den mad a lez da hered mibien ha nized ; ha danvez ar peher a zo miret evid an den reiz.

23. Kalz a frouez a zo e parkeier an tadou : hogen er re all e tastumer heb poell.

24. Neb a espern ar wialenn, a gasa e vab ; hogen an hini e gar, e gelenn gand preder.

25. An den reiz a zebr, hag a leugn e ene ; hogen kov ar re fallagr ne deo ket evid kaoud e walh.

XIV. Pennad.

Labour. Doujañs an Aotrou. Habaskaded.

1. Ar wreg fur a zav he zi ; an hini diboell a zispenn gand he daouarn an hini a zo savet.

2. Neb a vale en eun hent eeun, hag a zouj Doue, a zo disprizet gand an hini a gerz en eur gwall hent.

3. E genou an den diboell ema gwialenn ar rogentez ; hogen muzellou ar re fur a ziwall anezo.

4. El leh n'eus ket a ejenned, eo goullo ar hrañch ; hogen el leh ma'z eus kalz a ed, eno eh anavezer anad nerz an ejenn.
5. An test feal ne lavar ket a hevier ; hogen ar gwall dest a embann ar gevier.
6. Ar goapaer a glask ar furnez, ha n'he hav ket ; ar gelennadurez a zo êz d'ar re fur.
7. Kee a-eneb d'an den diboell ; rag ne anavez ket komziou ar furnez.
8. Furnez an den fur eo evesaad ouz e hent ; ha diboell ar re ziskiant a zo fazi.
9. An den diskiant a ra goap euz ar pehed ; hag ar hras a chomo e-touez ar re reiz.
10. Ar galon a anavez c'hwevder heh ene ; hag an diavêziad n'en-devezo perz ebed en he levenez.
11. Ti ar re fallagr a vezo diskaret ; hogen teltou ar re reiz a vleunio.
12. Eun hent 'zo hag a zo eeun, war mennoz an dud ; hogen e ziwez a gas d'ar maro.
13. Ar c'hoarz a vezo mesket gand ar boan, hag an doan a heul al levenez.
14. An den diboell en-devezo e walh euz e heñchou, hag an den mad c'hoaz ouspenn.
15. An den diboell a gred da beb ger ; an den fur a zell ouz e oll gammejou. D'ar mab touelluz ne hoarvezo mad ebed ; hogen ar servijer fur a yelo da vad en e oberiou, hag a gavo eeun e hent.
16. An den fur a zouj, hag a bella diouz an droug ; an den diboell a ya e-biou, hag a gemer fiziañs.
17. An den dihabask a ray traou diboell ; hag an den fur a zo kasaet.
18. Ar re ziskiant o-devezo an diboell ; hag an den fur a hortozo ar ouiziegez.
19. An dud fall a vezo gourvezet dirag ar re vad : hag ar re fallagr e-tal dor ar re reiz.
20. An den paour a vezo kasaet gand e gerent-nez o-unan ; hogen an den pinvidig en-deus kalz a vignoned.
21. Neb a zispriz e nesa, a beh ; hogen neb en-deus truez ouz ar beorien a vezo eüruz. Neb a gred en Aotrou, a gar an drugarez.
22. Fazia a ra ar re a zo droug ; an drugarez hag ar wirionez eo a aoz ar madou.
23. E peb labour ema ar fonnder ; hogen el leh ma komzer kalz, eno aliez ema an dienez.
24. Kurunenn ar re fur eo o madou ; diboell ar re ziskiant eo an diboell.
25. An test feal a zieub an eneo ; hag an den daoubleg a lavar gevier.
26. E doujañs an Aotrou ema ar fiziañs kreñv, hag ar ged a vezo en e vugale.
27. Doujañs an Aotrou a zo eur feunteun a vuhez, evid ma pellaint diouz dismantr ar maro.
28. E niver braz ar bobl ema enor ar roue ; hag e niver bihan ar bobl mezegez ar priñs.
29. Neb a zo habask, en em ren gand eur furnez vraz ; hogen neb a zo dihabask a zav e ziboell.
30. Yehed ar galon eo buhez ar hig ; an erez eo breinadurez an eskern.
31. Neb a wash war an den dieneg, a gunuh e grouer ; hogen neb en-deus truez ouz ar paour, a enor Doue.
32. An den fallagr a vezo distaolet en e zrougiez ; hogen an den reiz a laka e hed en e varo.
33. E kalon an den poelleg eh arzao ar furnez, hag eñ a zesko an oll re ziouizieg.

34. Ar reizder a uhella ar broadou ; hogen ar pehed a laka ar poblou da veza reuzeudig.

35. Ar servijer poelleg a zo hetuz d'ar roue ; hogen e vuanegez a gouezo war an hini didalvez.

XV. Pennad.

Doze a anavez pep tra.

1. Eur ger sioul a dorr ar vuanegez ; eur ger dichek a laka da zevel ar froudenn.

2. Teod ar re fur a gempenn ar ouiziegez ; genou ar re ziskiant a lavar traou diboell.

3. E peb leh daoulagad an Aotrou a zell ouz ar re vad hag ouz ar re fall.

4. An teod sioul a zo eur wezenn a vuhez ; hogen an hini direiz a dorr ar spered.

5. An den diskiant a ra goap euz a gelenn e dad ; hogen an hini a bleg d'ar helenn a zeuio da veza furroh. En eur reizded vraz-meurbed ez eus eun nerz vraz ; hogen mennoziou ar re fallagr a vezo diwriziennet.

6. E ti an den reiz ez eus eun nerz vraz ; hag e frouez an den fallagr n'eus nemed reustl.

7. Muzellou ar re fur a skigno ar ouiziegez evel had ; kalon ar re ziskiant ne ray ket evel-se.

8. Viktimou ar re fallagr a vezo argaruz d'an Aotrou ; gouestlou ar re reiz a vezo hetuz dezañ.

9. Hent an den fallagr a zo argaruz d'an Aotrou ; neb a heuill ar reizded a zo karet gantañ.

10. C'hwero eo ar gelennadurez evid an hini a zilez hent ar vuhez ; neb a gasa ar hrozou a varvo.

11. An ivern hag ar gollidigez a zo dirag an Aotrou ; pegement³⁴⁹ ouspenn kalonou bugale an dud ?

12. Ar gwall zen ne gar ket an hini a gelenn anezañ ; ha n'ez a ket da gavoud ar re fur.

13. Ar galon laouen a laka an den laouen ; glahar an ene a laka ar spered da weñvi.

14. Kalon an den fur a glask ar gelennadurez ; ha genou ar re ziboell en em vag gand diouiziegez.

15. Oll zeziou ar paour a zo fall ; an ene habask a zo evel eur banvez peurbaduz.

16. Gwell eo deom kaoud nebeud gand doujañs an Aotrou, eged kaoud teñzoriou braz ne dom ket evid kaoud or gwallh anezo.

17. Gwell eo beza galvet da zebri louzou gand karantez, eged da zebri al leue lard gand kasoni.

18. An den buaneg a laka strivou da zevel ; neb a zo habask a beoc'haa ar re a oa savet.

19. Hent ar re zieg a zo evel eur hae spern ; hent ar re reiz heb harz ebed.

³⁴⁹ pegement : pegen.

20. Ar mab fur a laouena e dad ; an den diboell a zispriz e vamm.
21. Ar follentez a zo levez an den foll ; hogen an den fur a zell ouz e gammejou.
22. Ar mennoziou a ya da get el leh n'eus ket a guzul ; hogen el leh ma'z eus kalz a guzulierien, int startaet.
23. En em laouennaad a ra an den e lavar e henou ; hogen al lavar deread eo ar gwella.
24. Ravent ar vuhez a zo a-zioh d'an den desket, evid ma pellaio diouz goueled an ivern.
25. An Aotrou a ziskaro ti ar re rog ; hag e startay harzou an intañvez.
26. Ar gwall vennoziou a zo argaruz d'an Aotrou ; hag al lavar glan a vezo hetuz-braz dezañ.
27. Neb a zo gwall biz a gas ar reustl en e di ; hogen neb a gasa ar roou a vevo. Gand an drugarez hag ar feiz eo glannaet ar pehejou ; gand doujañs an Aotrou e pellaio pep hini diouz an droug.
28. Kalon an den mad 'zo e breder nemetañ; geriou ar re fallagr a zo leun a zroug.
29. Pell ema an Aotrou diouz ar re fallagr ; hag eñ a zelaouo ouz pedennou ar re reiz.
30. Luh an daoulagad a laouena an ene ; an ano-mad a larda an eskern.
31. Ar skouarn a zelaou ar helenn a vuhez, a chomo e-kreiz ar re fur.
32. Neb a zistaol ar helenn, a zispriz e ene ; hogen neb a zelaou ar hrozou, a biaou e galon.
33. Doujañs an Aotrou a zo kelenn ar furnez ; hag an uvelded a ya a-raog ar hloar.

XVI. Pennad.

Buaneged hag habaskded ar roue.

1. D'an den eo aoza e ene ; ha d'an Aotrou rena e deod.
2. Oll heñchou an den en em ziskouez dirag e zaoulagad ; hogen an Aotrou a bouez ar sperejou.
3. Ro da oberiou da anaoud d'an Aotrou, ha da vennoziou a vezo renet³⁵⁰.
4. An Aotrou en-deus greet pep tra evitañ e-unan ; hag ar fallagr zoken evid ar gwall zeiz.
5. Peb den rog a zo argaruz d'an Aotrou ; ha pa en-defe e zaouarn an eil en egile, ne ve ket dinamm. Derou an hent mad eo ober ar reizded ; hetusoh eo da Zoue eged laza ostivou.
6. Gand trugarez ha gwirionez e vez dasprenet ar fallagriez ; ha gand doujañs an Aotrou e pellaer diouz an droug.
7. Pa vezo kavet mad gand an Aotrou heñchou an den, e lakay e enebourien o-unan da zistrei d'ar peoh.
8. Gwell eo nebeud eged reizded, eged kalz madou gand fallagriez.
9. Kalon an den a aoz e hent ; hogen d'an Aotrou eo reiz e gammejou.
10. Lavar Doue 'zo war muzellou ar roue, e henou ne fazio ket en e varniou.

³⁵⁰ renet : a deuio da benn.

11. Ar pouez hag ar valañs reiz a zo d'an Aotrou ; hag e oll oberiou a zo evel mein ar zah.
12. Argaruz eo d'ar roue ar re a ra fallagriez ; rag ar reizded eo a starta an tron.
13. Ar muzellou reiz a zo youl ar roueed : neb a gomz gand reizded, a vezo karet.
14. Buanegez ar roue a zo eur hannad a varo ; hag an den fur e habaskay.
15. Sell laouen ar roue a ro ar vuhez ; hag e habaskded a zo evel glao an diskar-amzer.
16. Dalh ar furnez, rag gwelloh eo eged an aour ; ha pren ar poell, rag talvoudusoh eo eged an arhant.
17. Ravent ar re reiz a bella diouz an droug ; neb a vir e ene en em zalh en e hent.
18. Ar rogentez a ya a-raog an dismantr, hag ar spered a zav a-raog an diskar.
19. Gwell eo beza uvellaet gand ar re guñv eged ranna an diwiskou gand ar re rog.
20. Neb a zo gouizieg er gêr, a gavo ar mad ; hag an hini a laka e hed en Aotrou, a vezo eüruz.
21. Neb a zo fur a galon, a vezo galvet poelleg ; ha neb a zo c'hwek e lavar, en-devezo gwelloh traou³⁵¹.
22. Ar ouiziegez a zo, evid an hini en-deus anezi, eur feunteun a vuhez ; deskadurez ar re ziskiant 'zo follentez.
23. Kalon an den fur a zesko e henou ; hag eur hras nevez a lakay war e vuzellou.
24. Geriou reiz a zo evel eun direnn vel ; c'hwekter an ene a zo yehed an eskern.
25. Eun hent a zo, hent eeun a gav d'an den : hag ar penn diweza anezañ a gas d'ar maro.
26. Ene an hini a labour, a labour evitañ, o veza ma'z eo dalhet gand e henou.
27. An den fallagr a gleuz³⁵² an droug, ha war e vuzellou ez eus eun tan loskuz.
28. Ar gwall zen a laka strivou da zevel ; hag an droug-komzer a rann ar briñsed.
29. An den direiz a likaou e vignon ; hag e kas anezañ dre eun hent ha n'eo ket mad.
30. Neb a venn gwall draou gand daoulagad posteg, a zeven an droug o waska e vuzellou gand e zent.
31. Eur gurunenn a enor eo ar gozni, pa en em gav e hent ar reizded.
32. An den a oar gouzañv e boan a zo gwelloh eged an den kaloneg ; hag an hini a oar aotrounia e spered, eged an hini a gemer ar hêriou dre nerz.
33. Skrijou ar sort 'zo taolet e pleg ar zae ; hogen an Aotrou eo a reiz anezo.

XVIII.Pennad.

Rogentez hag uvelded.

³⁵¹ gwelloh traou : traou gwelloh.

³⁵² a gleuz : a zabar.

1. An hini a fell dezañ pellad diouz e vignon, a glask an dro ; da veza tamallet e vezo e peb amzer.
2. An den diskiant ne zegemer ket komziou ar furnez, ma ne gomzit ket outañ hervez ar pezh en-deus en e galon.
3. Pa vez deuet an den fallagr beteg goueled ar pehejou, e tispriz pep tra ; hogen ar vez hag ar vezegez a ya war e heul.
4. Ar geriou a zeu er-mêz euz a henou an den a zo evel dour don ; ha feunteun ar furnez evel eur froud dihlanet.
5. N'eo ket mad derhel stad euz a eun den fallagr piou bennag eo, evid distrei diouz ar wirionez er varn.
6. Muzellou an den diskiant en em vesk er strivou ; hag e henou a halv ar rendaelou.
7. Genou an den diskiant a vrev anezañ ; hag e vuzellou a zo koll ene.
8. Geriou an den touelluz a zo evel pa vent eeun ; hogen mond a reont beteg goueled ar hov. An aon a ziskar en den dieg ; hogen eneo ar re laosk o-devezo naon.
9. Neb a zo laosk ha digalon en e labour a zo breur d'an hini a freuz ar pezh en-doa greet.
10. Eun tour kreñv eo ano an Aotrou ; an den reiz a red etrezeg ennañ, hag e vezo uhellaet.
11. Danvez an den pinvidig a zo evel eur gêr greñv, hag evel eur vur deo war-dro dezañ
12. A-barz beza brevet, kalon an den a zao, hag a-barz beza enoret, e vez izellaet.
13. Neb a respont a-barz ma en-deus klevet, a ziskouez penaoz eo eun den diboell, hag a dalv e ve mezekaet.
14. Spered an den a harp e zempladurez ; hogen piou a hello harpa eur spered hag a zo taer da vuanegez ?
15. Ar galon fur he-devezo ar ouiziegez ; ha skouarn ar re fur a glask an deskadurez.
16. Ar pezh a zo roet gand an den a ledana e hent, hag her has dirag ar briñsed.
17. An den mad en em damall e-unan da genta ; e vignon a zeu goude, hag a furch e diabarz e galon.
18. Ar sort a habaska ar rendaelou ; barner eo etre ar re halloudeg.
19. Ar breur a zo skoazellet gand e vreur, a zo evel eur gêr greñv ; hag o barnou a zo evel sparlou ar hêriou.
20. Euz a frouez genou an den, e vezo karget e gov ; ha gand ar pezh a hano e vuzellou en-devezo e walh.
21. Ar maro hag ar vuhez a zo e-kerz an teod ; ar re a gar anezañ, a zebro e frouez.
22. Neb en-deus kavet eur wreg vad, en-deus kavet eun dra vad ; hag eñ a buñso grad-vad an Aotrou. Neb a gas kuit eur wreg vad, a gas kuit eun dra vad ; hogen neb a zalh eun avoultrez, a zo eun den diskiant ha fallagr.
23. Gand pedennou uvel e komz ar paour ; hag an den pinvidig gand komziou dicheg.
24. Neb 'zo karadeg e-keñver an dud, a vezo gwelloh da vignon eged ar breur.

XIX. Pennad.

Penaoz e tleer kastiza e vugale.

- 1 Gwell eo ar paour a vale en e eeunder, eged an den pinvidig a zo gwar e vuzellou, hag a zo eun den diskiant,
2. El leh n'ema ket gouiziegez an ene, n'eus ket a vad ;ha neb a gerz re vuan, a gouezo.
- 3.Follentez an den hel laka da fazia en e hent ; hag entana a ra e galon a-eneb Doue.
4. Ar madou a ro kalz mignoned nevez ; hogen ar re zoken en-doa, a-raog ma oa paour, a ya neuze kuit dioutañ.
- 5.Ar gaou-dest ne chomo ket digastiz ; ha neb a lavar gevier, ne deho ket.
6. Kalz a dud a enor an den galloudeg, hag a zo mignoned d'an hini en-deus peadra da rei.
7. Breudeur ar paour a gasa anezañ ; hag ouspenn e vignoned a bella dioutañ. Neb na glask nemed geriou, n'en-devezo netra.
8. Hogen neb en-deus spered, a gar e ene, ha neb a vir ar furnez a gavo ar mad.
9. Ar gaou dest ne chomo ket digastiz ; ha neb a lavar gevier a yelo da get.
10. Ne zere ket an dudiu ouz an den diboell, ha ne dle ket ar sklav aotrounia war ar briñsed.
11. Gouiziegez an den a anavezer diouz e habasketed ; hag e hloar eo mond dreist ar fallagriez.
12. Evel yuderez al leon eo buanegez ar roue ; hag evel ar gliz war ar geot eo e levenez.
13. Eur mab foll a zo glahar e dad ; hag eur wreg kruzuz a zo evel eun doenn a ziver bepred.
14. An tad hag ar vamm a ro an tiez hag ar madou : hogen an Aotrou e-unan eo a ro eur wreg fur.
15. An diegi a zegas ar mored, hag an ene laosk en-devezo naon.
16. Neb a vir ar gourhemenn, a vir e ene ; hogen neb a zilez e hent, a varvo.
17. Neb en-deus truez ouz ar paour, a brest d'an Aotrou war gampi ; hag eñ a zsitaoalo dezañ ar pezh en-devezo prestet.
18. Kastiz da vad endra ma ez eus danvez gwellaad ennañ : hogen na laka ket en da vennoz dond d'e laza.
19. Neb a zo dihabask, a houzañvo gwall ; ha pa en-devezo skrapet, e tistaolo re all.
20. Selaou an ali, ha kemer ar helenn, evid ma vezi fur en da ziwez.
21. Kalz mennoziou a zo e kalon an den ; hogen youl an Aotrou a bado bepred.
22. An den tavanteg a zo trugarezuz ; ha gwell eo ar paour eged an den gaouiad.
23. Doujañs an Aotrou a gas d'ar vuhez ; hag er fonnder e chomo, heb ma vezo emwelet gand an droug.
24. An den dieg a guz e zorn dindan e gazell, ha n'e zoug ket beteg e henou.
25. Pa vezo kastizet ar gwall zen, an den diskiant a zeuy da veza furroh ; hogen mar krozez an den fur, e poello ar helenn.
26. Neb a hlahar e dad, hag a laka e vamm da dehoud, a zo eun den fallagr ha kriz.

27. Na baouez ket, va mab,da zelaoui ar gelennadurez, ha desk lavariou ar ouiziegez.

28. Ar gwall dest a ra goap euz ar varn ; ha genou ar re fallagr a lonk ar fallagriez.

29. Aozet eo ar varn evid ar hoaperien ; hag ar morzoliou evid skei war korvou ar re ziskiant.

XX. Pennad.

Red eo enori e dad.

1. Eun dra diboelluz eo ar gwin, hag ar vezventi a zo diroll ; piou bennag a laka e zudi enno, ne vezo ket fur.

2. Evel yuderez al leon eo spont ar roue ; neb a heg anezañ, a beh a-eneb e ene e-unan.

3. Da enor eo d'an den pellaad diouz ar strivou ; hogen ar re ziskiant oll en em vesk er rendaelou.

4. An den dieg n'eo ket fellet dezañ ara, en abeg d'ar yenienn ; klask a ray eta e voued pa vezo deuet an hañv, ha ne vezo ket roet dezañ.

5. Evel dour don ema ar huzul e kalon an den ; hogen an den fur e buñso.

6. Kalz a dud a zo galvet trugarezuz ; hogen piou a gavo eun den feal ?

7. An den reiz pehini a vale en e eeunder, a lezo e vugale eüruz war e lerh.

8. Ar roue a zo azezet war dron e varn, a fletr peb droug gand e zell.

9. Piou a hell lavaroud : Glan eo va halon, dinamm en e behed ?

10. Daou bouez, ha diou vent, a zo traou argaruz dirag Doue.

11. Diouz techou ar bugel e vezo gwelet hag-eñ vezo glan ha reiz en e oberiou.

12. Ar skouarn a glev, hag al lagad a wel, a zo bet greet o-daou gand an Aotrou.

13. Na gar ket ar housk, gand aon na zeuje an dienez da waska warnout : digor da zaoulagad, ha debr bara da walh.

14. Fall eo, fall eo an dra-ze, eme pep prener : ha pa eo eet kuit, neuze en em veul.

15. Aour a zo, ha kalz a berlez ; hogen muzellou gouizieg a zo eul lestr talvouduz-braz.

16. Tenn e zae digand an hini en-deus kreteet evid eun diavêziad, ha kemer gouestl digantañ evid an diavêzidi.

17. Ar bara a hevier a zo c'hwek d'an den ; hogen goude-ze e vezo leun e henou a hrouan.

18. Ar mennoziou en em stard gand ar huzulioù ; hag ar brezelioù a dle beza renet gand ar furnez.

19. Arabad eo dit darempredi an hini a ziskul an traou kuzet, a vale en touellerez, a zigor e henou bepred.

20. Neb a villig e dad hag e vamm, e gleuzeur a vezo mouget e-kreiz an deñvalijenn.

21. An degouez a baster da gaoud er penn kenta, ne vezo ket benniget en diwez.

22. Na lavar ket : Me a zistaolo an droug. Gortoz an Aotrou, hag eñ az tenno a boan.

23. Daou bouez a zo argaruz dirag an Aotrou ; ar gwall valañs n'eo ket mad.

24. An Aotrou eo a reiz kammejou an den ; hogen piou eo an den a hell poella e hent e-unan ?

25. Eun dismantr eo d'an den lonka e zent³⁵³ ; hag en em zislavaroud goude e ouestl.

26. Ar roue fur a skign ar re fallagr, hag o laka dindan ar volz.

27. C'hwehadenn an Aotrou a zo en den evel eur hleuzeur : dizolei a ra al lehiou kuzeta euz ar hov.

28. An drugarez hag ar wirionez a vir ar roue ; hag e guñvelez a starta e dron.

29. Leverez an dud yaouank eo e o nerz ; ha sked ar re goz eo o bleo gwenn.

30. An droug a vezo pareet gand ar bloñsou drouglivet, ha gand ar gouliou a zo kuzet e goueled ar hov.

XXI. Pennad.

Levenez an den reiz. Nerz an den fur.

1. Evel dour a red ema kalon ar roue e dorn an Aotrou : el leh ma kar e tro anezañ.

2. Oll heñchou an den a zo eeun dirazañ ; hogen an Aotrou a bouez ar halonou.

3. Ober trugarez ha barn a zo gwell gand an Aotrou eged viktimou.

4. Gand ar galon rog e teu balh an daoulagad ; ha kleuzeur ar beherien eo ar pehed.

5. Mennoziou an den kreñv a zo bepred ar fonnder ; hogen peb dieg a zo bepred en dienez.

6. Neb a zastum teñzoriou gand eur genou gaouiad, a zo eun den gwan ha diboell ; hag eñ en em daolo e rouejou ar maro.

7. Preizerez ar re fallagr o diskaro, o veza n'eo ket fellet dezo ober barn eeun.

8. Gwall hent an den, a zo eun hent a-ziavêz ; hogen pa vez glan an den, e oberiou a vez eeun.

9. Gwell e ve azeza e korn lein eun ti, eged chom gand eur wreg araoüz en eun ti eeun.

10. Ene ar fallagr a venn an droug, ha n'en-deus ket a druez ouz e nesa.

11. Pa vezo kastizet ar gwall zen, an den diskiant a zeuy da veza furroh : ha ma heul eun den fur, e kemero ar ouiziegez.

12. An den reiz a eñvor gand preder war ti an den fallagr, evid ma tenno ar re fallagr diouz an droug.

13. Neb a zerr e skouarn ouz garm ar paour, a harmo e-unan, ha ne vezo ket selaouet outañ.

14. Eun dra a zo roet e kuz a ziskar ar vuaneged, hag eur govr en askre an argarzidigez a vrasa.

15. Levenez an den reiz eo ober barn³⁵⁴, ar spont a zo evid ar re a ra fallagriez.

16. An den a vezo bet distroet euz a hent ar gelennadurez, a chomo e strollad al langouineien.

³⁵³ lonka e zent : diwar c'hoari.

³⁵⁴ ober barn : beza just.

17. Neb a gar ar banveziou a vezo en dienez ; neb a gar ar gwin, hag an traou c’hwek, ne vezo ket pinvidig.
18. Evid an den reiz e vezo roet ar fallagr ; hag an den direiz evid ar re eeun.
19. Gwell eo chom en eun douar didud, eged gand eur wreg araoüz ha kruzuz.
20. Eun teñzor hetuz hag eoul a zo e ti an den reiz ; hogen an den direiz o foeltro.
21. Neb a heul ar reizded hag an drugarez a gavo ar vuhez, ar reizded, hag ar hloar.
22. An den fur a zo pignet e kêr ar re greñv, ha diskaret eo bet an nerz gantañ el leh ma lakae e fiziañs.
23. Neb a ziwall e henou hag e deod, a ziwall e ene diouz an enkrezou.
24. An den rog ha dichek a zo galvet diouizieg, o veza ma eo balh en e vuanegez.
25. Ar c’hoantou a laz an den dieg ; rag e zaouarn ne hoantaont ket ober tra ebed.
26. ‘Hed an deiz ne ra nemed c’hoantaad ; hogen neb a zo reiz, a ro ha na ehan ket.
27. Ostivou ar re fallagr a zo argaruz, o veza ma int kinniget diwar-benn ar gwall.
28. An test gaouiad a yelo da get ; an den o senti a vezo treh en e gomziou.
29. An den fallagr ‘zo rogentez en e zaoulagad ; hogen an den reiz a zifazi e hent.
30. N’eus ket a furnez, n’eus ket a boell, n’eus ket a guzul a-eneb an Aotrou.
31. Eur marh a aozer evid deiz ar stourm ; hogen an Aotrou eo a denn a boan.

XXII. Pennad.

Red eo selaoui ar furnez.

1. Gwell eo eun ano mad eged madou braz : hag ar hras vad a zo dreist an arhant hag an aour.
2. Ar paour hag ar pinvidig a zo en em gavet o-daou ; an Aotrou eo en-deus o greet an eil hag egile.
3. An den gwenn³⁵⁵ a wel an droug, hag en em guz ; an den diboell a ya e-biou, hag e kav e goll.
4. Gobr ar poell eo doujañs an Aotrou, ar madou, ar hloar hag ar vuhez.
5. An armou hag ar hlezeier a zo e hent an den fallagr ; hogen an hini a ziwall e ene en em denn pell diouto.
6. Peurvua e lavarar : An den yaouank a heul e hent kenta ; ha pa zeuy da veza koz, ne bellay ket dioutañ.
7. An den pinvidig en-deus galloud war an den paour ; hag an hini a gemer arhant war gampi, a zo dindan dalh an hini en-deus e brestet.
8. Neb a had ar fallagriez, a vedo an droug, ha gwalenn e vuanegez a vezo torret.
9. Neb a zo douget d’an drugarez, a vezo benniget ; o veza ma en-deus roet euz e vara d’ar paour.

³⁵⁵ An den gwenn : an den evezieg.

10. Kas kuit ar goapaer, hag an dael a yelo gantañ : hag eh ehano ar breudou hag ar hunuhennou.

11. Neb a gar ar hlanded a galon, en-devezo ar roue da vignon en abeg da hras e vuzellou.

12. Daoulagad an Aotrou a vir ar ouiziegez ; ha geriou an den direiz a vezo kaset da get.

13. An den dieg a lavar : Ema al leon er-mêz, e-kreiz ar ruou e vijen lazet.

14. Eur poull don eo genou an diavêziadez : an hini en-deus drouglañs an Aotrou, a gouezo ennañ.

15. Ar follentez a zo stag e kalon ar bugel, ha gwialenn ar helenn he haso kuit.

16. Neb a wash war ar paour, evid kreski e vadou e-unan, a roy ivez da binvidikoh egetañ, hag a gouezo en dienez.

17. Izela da skouarn, ha selaou geriou ar re fur ; ha stag da galon ouz va helennadurez.

18. Houmañ a vezo kaer dit da weloud, pa he miri en da galon ; hag hi en em skigno war da vuzellou.

19. Evid ma vezo da fiziañs en Aotrou : rag se em-eus he diskouezet dit hirio.

20. Setu em-eus he disrevellet dit teir gwech gand preder ha gouiziegez :

21. Evid rei da anaoud dit peger stard eo geriou ar wirionez, ha ma helli komza diwar o fenn d'ar re o-deus da zegaset.

22. Ne heskin ket ar paour, o veza ma eo paour ; na wash ket war an den tavanteg e-tal ar porz.

23. Hag an Aotrou a varno e gefridi, hag eñ a doullo³⁵⁶ ar re o-devezo toullet o ene³⁵⁷.

24. Ne vezez ket mignon da eun den buaneg, ha na vale ket gand eun den diboell ;

25. Gand aon ma teskfes e raventchou, ha ma rofeş gwall skouer d'az ene.

26. N'en em unvan ket gand ar re a ro o daouarn³⁵⁸, hag en em ginnig da gret evid an dleourien.

27. Rag ma n'eh-eus ket peadra da zisteurel, petra a viro na vezo tennet ar vallin diwar da wele ?

28. N'ez a ket e-biou d'an harzou koz a zo bet lakaet gand da dadou.

29. Ha gwelet eh-eus-te eun den taer en e ober ? Eñ a zavo dirag ar roueed, ha ne zavo ket dirag an dud dister.

XIII. Pennad.

Chom stard e doujañs an Aotrou.

1. Pa vezi azezet evid debri gand ar priñs, laka evez braz ouz ar pez a vedzo lakaet dirazout.

2. Laka eur gontell en da houzoug, mar dema koulskoude da ene en da gerz.

3. Na hoanta ket euz a voued an hini gand pehini ema ar bara a hevier.

4. Na labour ket evid pinvidikaad ; hogen laka harzou ouz da boell.

³⁵⁶ eñ a doullo a lazo.

³⁵⁷ ar re o-devezo toullet o ene : ar re o-devezo kemeret pep tra diganto.

³⁵⁸ ar re a ro o daouarn : ar re a ro o ger.

5. Na zav ket da zaoulagad etrezeg ar madou ha na hellez ket da gavoud ;rag i a gemero diouaskell evel an erer, hag a nijo etrezeg an neñv.
6. Na zebr ket gand eun den hirêzuz, ha na hoanta ket euz e voued.
7. Rag e doare eun diouganer oh heulia e arvariou, e varn ar pezh na oar ket. Debr hag ev, a lavaro dit ; hag e galon n'ema ket ganez.
8. Ar boued az-poa debret a zislonki ; ha da gomziou kaer a golli.
9. Na gomz ket gand ar re ziskiant ; rag i a zisprizo furnez da heriou.
10. Na laka ket da zorn war harzou³⁵⁹ ar re vihan ; ha n'az a ket e park an emzivadad,
11. Rag galloudeg eo o har-nes ; hag eñ a ziwallo o gwir en da eneb.
12. Ra zavo da galon etrezeg ar gelennadurez, ha da ziskouarn etrezeg geriou ar ouiziegez.
13. Na espern ket ar helenn d'ar bugel ; rag mar skoez warnezañ gand ar wialenn, ne varvo ket.
14. Sko warnezañ gand ar wialenn ; hag e tieubi e ene diouz an ivern.
15. Va mab, mar deo fur da galon, va halon en em laouennay ganez ;
16. Ha va digroazell a drido : pa o-devezo da vuzellou lavaret geriou reiz.
17. Na hirêz ket da galon ar beherien ; hogen bez e doujañs an Aotrou 'hed an deiz :
18. Rag fiziañs az-pezo en da zeiz diweza, ha da hobr ne vezo ket tennet diganez.
19. Selaou, va mab, ha bez fur ; ha laka da galon da valea eeun en hent :
20. peg.debri kevred :
21. Rag neb a dremen e amzer oh eva hag o banvezi a zeuio da veza paour, ha neb a gousko kalz a vezo gwisket gand truillou.
22. Selaou da dad pehini en-deus da hanet³⁶⁰ ; ha na zispriz ket da vamm pa gosay.
23. Pren ar wirionez, ha na werz ket ar furnez, nag ar gelennadurez, nag ar poell.
24. Tad an den reiz a drido gand levnez ; neb en-deus ganet³⁶¹ eur mab fur, en em laouennay en abeg dezañ.
25. R'en em laouennay da dad ha da vamm, ha ra drido an hini he-deus da zouget.
26. Va mab, ro da galon din ; ha ra viro da zaoulagad va heñchou.
27. Rag eur gouli don eo ar plah fall hag eur puñs striz an diavêzadez.
28. Aoza a ray spiou war an hent evel eul laer, hag e lazo ar re a welo dievez.
29. Da biou e vezo lavaret gwa ? Da dad piou, gwa ? Da biou ar strivou ? Da biou ar poullou ? Da biou ar gouliou heb abeg ? Da biou teñvalder an daoulagad ?
30. Ha n'eo ket d'ar re a dremen o amzer oh eva gwin, hag a laka o dudi o houllou ar hopou ?
31. Na zell ket ouz ar gwin pa eo ruz, pa zeu da liva ar werenn ; gand c'hwekder ez a e-barz ;
32. Hogen en diwez e sank³⁶² evel an naer, hag e taol e gontamm evel eur bazilig³⁶³.

³⁵⁹ harzou : harzou ar parkou.

³⁶⁰ da hanet : ? da engehentet.

³⁶¹ ganet : ? engehentet.

³⁶² e sank : e peg.

³⁶³ eur bazilig : galleg.

33. Da zaoulagad a welo diavêziadezed, ha da galon a lavaro gwall draou.

34. Hag e vezi evel eun den kousket e-kreiz ar mor, hag evel eur sturier moredet, goude ma eo kollet gantañ e stur.

35. Hag e liviri : Va hanet o-deus, hogen n'em-eus ket e verzet ; va dedennet o-deus ; ha n'em-eus ket e ouezet : peur e tihunin-me, hag e kavin-me c'hoaz gwin da eva ?

XXIV. Pennad.

Doujañs Doue hag ar roue.

1. Na hirêz ket ar gwall zud, ha na hoanta ket beza ganto.

2. Rag o spered a boellad war ar skrabou, hag o muzellou ne leverint nemed traou touelluz.

3. An ti a vezo savet gand furnez, hag a vezo startaet gand ar poell.

4. Gand ar gelennadurez e vezo karget ar solierou a galz traou kaer ha talvouduz-braz.

5. An den fur a zo kreñv ; hag an den gouizieg a zo nerzuz ha galloudeg :

6. Rag gand ar poell e rener ar brezel ; hag el leh ma vezo kalz a guzuliou, e vezo an dieub³⁶⁴.

7. Re uhel eo ar furnez evid an den diskiant : ne zigoro ket e henou e-tal ar porz.

8. Neb a glask ober an droug, a vezo galvet foll.

9. Mennoz an den diskiant eo ar pehed ; hag ar gwall-gomzer a zo argaruz d'an dud.

10. Mar deuez da veza digalon e deiz an anken, da nerz a vezo displeberet.

11. Difenn ar re a gaser d'ar maro ; ha na ehan ket da zieubi ar re a gemerer evid o laza.

12. Ma levez : N'ema ket an nerz ganen ; neb a furch ar halonou her poello ; rag n'eus netra a guzet³⁶⁵ ouz mirer da ene, hag eñ a zistaolo d'an den hervez e oberiou.

13. Va mab, debr mel, rag mad eo, hag an direnn-vel pehini a zo c'hwek-braz d'az kenou.

14. Evel-se e vezo gouiziegez ar furnez evid da ene ; p'az-pezo he havet, az-pezo fiziañs en da zeiz diweza, ha da hed ne vezo ket kollet.

15. Na aoz ket a spiou ouz an den reiz, ha na glask ket ar fallagriez en e di, ha na reustl ket e ehan.

16. Rag seiz gwech e kouezo an den reiz, hag ez adsavo ; hogen ar re fallagr a vezo stlapet en droug.

17. Pa vezo kouezet da enebour, n'en em laouena ket ; ha pa vezo bevezet, na dridet ket da galon.

18. Gand aon n'her gwelfe an Aotrou, n'her havje ket mad, ha ne zeufe da denna da vuaneged diwarnezañ.

19. Na hourvenn ket ar gwall-dud, na hirêz ket ar re fallagr :

³⁶⁴ an dieub : an dieubidigez.

³⁶⁵ netra a guzet : netra kuzet.

20. Rag ar re zroug n'o-deus ket a hed en amzer da zond ; ha kleuzeur ar re fallagr a vougo.

21. Va mab, douj an Aotrou hag ar roue ; ha n'en em vesk ket gand al lañchenneien.

22. Rag o holl a zeuio war eun taol ; ha piou a anavez ar hastiz a raint o-daou³⁶⁶.

23. Kement-mañ a zo ivez evid ar re fur ; n'eo ket mad kaoud azaouez evid an den er varn.

24. Ar re a lavar d'an den fallagr : Eun den reiz out, a vezo milliget gand ar poblou, hag argarzet gand ar broadou.

25. Ar re a groz anezañ, a vezo meulet ; hag ar vennoz a ziskenno warnezo.

26. Neb a respont da eur re gand reizded, a bok dezañ war e henou.

27. Aoz da labour er-mêz, ha fourgas da bark gand preder ; evid ma savi goude da di.

28. Na vez ket eur gwall-dest a-eneb da nesa ; ha na likaou den gand da vuzellou.

29. Na lavar ket : Evel ma en-deus greet din, e rin dezañ ; me a zistaolo da bep hini hervez e oberiou.

30. Tremenet on dre bark an den dieg, ha dre winienn an den diskiant.

31. Ha setu e oa leun-oll a linad, ha goloet a spern ; hag ar voger vein a oa diskaret.

32. Pa em-eus gwelet kement-se, em-eus e lakaet em halon, hag on en em zesket gand ar skouer-ze.

33. Kouska a ri eun nebeud, emeve ; eun nebeud e voredi ; eun nebeud e likii da zaouarn an eil en egile evid ehana :

34. Hag an denez a zeuy d'az kavoud evel eur reder³⁶⁷, hag ar baourentez evel eun den armet³⁶⁸.

XXV. Pennad.

Ober vad d'e enebourien.

1. Ar parabolennou-mañ a zo c'hoaz euz a Zalomon, hag a zo bet dezouget gand tud Ezeq'hias, roue Juda.

2. Gloar Doue eo kuza ar ger³⁶⁹, ha gloar ar roueed eo enklaskoud al lavar³⁷⁰.

3. An neñv en e uhelder, an douar en e zonder, ha kalon ar roueed, ne heller ekt da hwilia enno.

4. Tenn ar mergl euz an arhant, hag e teuy anezañ eul lestr glan-braz.

5. Tenn ar fallagriez euz a-zirag ar roue, hag e dron a vezo startaet gand ar reizded.

6. N'en em ziskouez ket gand fouge dirag ar roue, ha na zav ket e-leh ar re vraz,

³⁶⁶ ar hastiz a raint o-daou : ar hastiz a raio an eil hag egile.

³⁶⁷ eur reder : eur hantreer (o laerez).

³⁶⁸ ar baourentez evel eun den armet : ?

³⁶⁹ kuza ar ger : kuzad an traou.

³⁷⁰ enklaskoud al lavar : klask gouzoud ar pezh a vez lavaret.

7. Rag gwell eo e ve lavaret dit : Pign amañ, eged ne deo beza izellaet dirag ar priñs.

8. Na ziskuill ket kerkent en eur striv ar pezh o-deus gwelet da zaoulagad : gand aon, goude beza tennet an enor digand ad vignon, ne hellfes mui e zihaoui.

9. Hanter da gefridi gand da vignon, ha na ziskuill ket ar pezh a dle beza kuzet ouz eun diavêziad ;

10. Gand aon na gunuhe ahanout pa en-devezo e glevet ha n'az tamallfe heb ehan. Ar hras hag ar garantez a zieub ; mir o, gand aon na gouezjes en dismegañs.

11. Ar ger a leverer en e amzer a zo evel avalou aour e gweleou arhant.

12. An tamall greet d'an den fur, ha d'ar skouarn zentuz, a zo evel eul lagadenn-skouarn aour gand eur berlezenn luhuz.

13. Ar hannad feal a zo d'an hini en-deus e gaset, evel yenienn an erh e amzer ar mederez ; lakaad a ra da ehana ene e vestr.

14. Neb en em fouge ha na zeven ket e her, a zo evel koumoul hag avel, heb glao goude.

15. Gand ar zioulded eo habaskaet ar priñs, hag an teod kuñv a dorr ar pezh a zo ar haleta.

16. Ma eh-eus kavet mel, debr da walh anezañ, gand aon mar debres re, na zeujes d'e zislonka.

17. Tenn da droad euz a di da nesa, gand aon na zeuje da herêzi ouzit ha d'az kasaad.

18. Neb a zoug eur gwall desteni a-eneb e nesa, a zo eun dared, hag eur hleze, hag eur saez lemm.

19. Fizioud en eur mignon displeal e deiz an anken, eo fizioud en eun dant brein, hag en eun troad skuiz,

20. Ha lezel e vantell en eun deiz yen. Ar hanaouennou a ganer da eur gwall galon, a zo evel gwinegr war nitr³⁷¹. Evel ma tebr an tartouz ar mezer, ha ma toull ar preñv ar hoad ; evel-se doan an den a grign e galon.

21. Ma en-deus naon da enebour, ro da zebri dezañ ; ma en-deus sehed, ro dour da eva dezañ ;

22. Rag glaou beo a zastumi war e benn, hag an Aotrou e zistaolo dit.

23. Avel an hanternoz a gas kuit ar glao, hag an dremm drist an teod lañchennuz.

24. Gwell eo beza azezet en eur hogn e lein an ti, eged chom gand eur wreg araouiz en eun ti ehon.

25. Evel dour fresk d'an hini en-deus sehed, eo eur helou mad a zeu euz a eur vro bell.

26. An den reiz a gouez dirag an den fallagr, a zo evel eur feunteun strafuillet gand an troad, hag eur vammenn zaotret.

27. Evel n'eo ket mad ar mel evid an hini a zebr kalz anezañ ; evel-se neb a hwilio ar veurded, a vezo mahet gand ar hloar.

28. Neb na hell ket derhel e spered pa gomz, a zo evel eur gêr digor ha divur³⁷² war he zro.

XXVI. Pennad.

³⁷¹ nitr : ? (nitrig ?)

³⁷² divur : : heb mur.

Euz ar gwall deod.

1. Evel an erh en hañv, hag ar glao er mederez ; evel-se ar hloar na zere ket ouz an den diskiant.
2. Evel eun evn a nij euz a eul leh da eul leh all, hag eur golvan a a ya a bep tu ; evel-se ez ay ar valloz lavaret heb abeg a-eneb eur re bennag.
3. Ar fouet a zo evid ar marh, ar waskenn evid an azen, hag ar wialenn evid kein an den direiz.
4. Na respont ket d'ar foll hervez e follentez, gand aon an zeufes heñvel outañ.
5. Respont d'ar foll hervez e follentez, gand aon na lakaje en e benn eo fur.
6. Neb a gas e heriou dre hanterourez eun den foll, en em laka da veza kamm hag a ev ar fallagriez.
7. Evel ne dalv netra d'an den kamm kaoud divesker kaer ; evel-se al lavariou fur a zo dizeread e genou an den foll.
8. Neb a zav e enor eun den diskiant, a zo evel an hini a daol eur mên er bern merkur³⁷³.
9. Evel ma savje eun drên e dorn eun den mezo ; evel-se ema ar barabolenn e genou ar re foll.
10. Ar varn a ziskoulm ar breudou ; hag an hini a laka an den fall da devel, a habaska ar rendaelou.
11. Evel ar hi a zistro d'e hwedenn, evel-se eo an den diboell a zistro d'e follentez.
12. Gwelet eh-eus-te eun den hag a zo fur war e veno ? Gwell eo ged an diskiant eged e hini.
13. An den dieg a lavar : Ema al leon en hent, hag al leonez en heñchou.
14. Evel ma tro eun nor war he mudurunou, evel-se e tro an den dieg en e wele.
15. An den dieg a guz e zorn dindan e gazell, hag a-veh ma e zoug beteg e henou.
16. Furroh eo an den dieg war e veno, eged seiz den hag a lavar traou fur.
17. Neb a ya e-biou, hag en em vesk en eur striv heb abeg, a zo evel an hini a gemer eur hi dre e skouarn.
18. Evel ma eo kabluz an hini a daol saeziou ha daredou evid laza eun all,
19. Evel-se eo ivez an hini a ra gaou ouz e vignon ouz e douella ; ha pa eo paket e lavar : O c'hoari em-eus e hreet.
20. Pa ne vezo mui a geuneud e vougo an tan ; ha pa ne vezo mui a lañchenneien, eh ehano ar strivou.
21. Evel ma eo ar glaou d'ar regez, hag ar heuneud d'an tan, evel-se an den taer a laka strivou da zével.
22. Geriou al lañchenneg a zo evel eeun, hogen mond a reont beteg goueled ar hov.
23. Muzellou kaer gand eur galon zaotr, a zo evel arhant dihlan lakaet evid kinkla eur pod-pri.
24. An enebour en em ro da anaoud gand e vuzellou, pa venn an touellerez en e galon.

³⁷³ merkur : ?

25. Ha pa gomzje ouzit gand kuñvelez, na gred ket dezañ³⁷⁴ ; rag seiz drougiez a zo en galon.

26. Neb a guz e gasoni gand touellerez, diskuliet e vezo e zrougiez er strollad braz³⁷⁵.

27. Neb a doull ar poull, a gouezo ennañ ; ha neb a ruill ar mên, e tistroio ar mên outañ.

28. An teod gaouiad ne gar ket ar wirionez ; hag ar genou labennuz a zegas dismantrou.

XVII. Pennad.

Ar meuleudiou a arnod ar galon.

1. Na fouge ket gand an antronoz, rag ne ouzout ket petra a hoarvezo en deiz da zond.

2. Ra veulo eun all arhanout, ha nann da henou ; eun diavêziad, ha nann da vuzellou da-unan.

3. Ar mên a zo pounner, hag an trêz a zo pouezuz ; hogen buanegez an den foll a zo pounneroh egeto o-daou.

4. Ar vuanegez hag an diboell a darz a zo didrugarez ; ha piou a hello herzel ouz froudou eun den buaneg ?

5. Gwell eo eur helenn³⁷⁶ anad, eged eur garantez kuzet.

6. Gwell eo gouliou an hini a gar, eged pokou touelluz an hini en-deus kasoni.

7. An ene en-devezo e walh a flastro an direnn vel ; hag an ene naoniet a gavo c'hwek ar pez a zo c'hwero.

8. Evel eun evn a ya er-mêz euz e neiz, evel-se eo an den a zilez e leh e-unan.

9. An tretou hag al louzou c'hwez-vad a laouena ar galon : ha kuzuliou mad eur mignon a laka an dudi en ene.

10. Na zilez ket da vignon, na mignon da dad : ha na'z a ket e ti da vreur e deiz da hlahar. Gwell eo eun amezeg tost, eged eur breur pell.

11. Desk ar furnez, va mab, ha laouena va halon : evid ma helli responta da neb az tamallo.

12. An den gwenn³⁷⁷ en-deus gwelet an droug, hag a zo en em guzet ; ar re zister a zo eet e-biou, hag o-deus gouzañvet ar holl.

13. Tenn e zae digand an hini en-deus kreteet evid eun diavêziad : ha tenn digantañ ar govr en-doa roet evid an diavêzidi.

14. Neb a vennig e nesa gand eur vouez kreñv, adaleg ar mintin pa zav, a vezo heñvel ouz an hini a villig anezañ.

15. Ar wreg kruzuz a zo heñvel ouz eun doenn hag a ziver 'hed ar goañv.

16. An hini a fell dezañ he derhel, a zo evel ma fellfe dezañ derhel an avel, pe an eoul a zo en e zorn.

17. An houarn a lemm an houarn, ha gweled eur mignon a gentraou ar mignon.

³⁷⁴ dezañ : anezañ.

³⁷⁵ er strollad braz : dirag eur bern tud.

³⁷⁶ eur helenn : eur hroz.

³⁷⁷ gwenn : evezieg.

18. Neb a vir ar wezenn fiez a zebro euz he frouez : ha neb a vir e aotrou a vezo savet e gloar.

19. Evel ma weler en dour penn ar re a zell ennañ, evel-se kalonou an dud a zo anad d'ar re fur.

20. An ivern hag al lonk n'int morse leun : evel-se daoulagad an dud ne dint ket evid kaoud o gwalh.

21. Evel ma eo arnodet an arhant er hleuzeur³⁷⁸, hag an aour er fornigell ; evel-se an den a zo arnodet gand genou an hini a veul anezañ. Kalon an den fallagr a glask an droug, hag ar galon eeun a glask ar ouiziegez.

22. Ha pa bilfdes an den foll en eul lestr-brev³⁷⁹, evel ma piler greun gand eun horz, ne dennfes ket ar follentez dioutañ.

23. Sell ouz da loened, ha laka evez ouz da zeñved ;

24. Rag n'az-pezo ket bepred ar galloud : hogen eur gurunenn a vezo roet a rumm e rumm.

25. Digor eo ar prajeier, hag e weler ar geot glaz, ha dastumet eo ar foenn diwar ar meneziou.

26. An ein a zo evid da zillad ; hag ar menned-gevr evid da voued, evid ar pez a zo red en da di, hag evid maga da vitizien.

XXVIII. Pennad.

Euz an hini a varn gand direizded.

1. Ar fallagr a deh ha den war e lerh ; hogen an den reiz, fiziuz evel eul leon, n'en-devezo aon ebed.

2. En abeg da behejou an douar e teu ar briñsed da greski e niver : hag en abeg da ouiziegez an den, pa oar ar pez a leverer, e vezo hirroh buhez ar priñs.

3. An den paour pehini a wash war ar re baour, a zo heñvel ouz ar glao diboell a zegas an naonegez.

4. Ar re a zilez al lezenn, a veul ar fallagr ; ar re he mir, a wink outañ.

5. An dud fall ne vennont ket er varn ; hogen ar re a enklask an Aotrou, a laka evez ouz pep tra.

6. Gwell eo ar paour a vale en e eeunder, eged an den pinvidig a ya er gwall heñchou.

7. Neb a vir al lezenn, a zo eur mab fur ; hoigen neb a ro da zebri d'ar vanvezerien, a vezeka e dad.

8. Neb a zastum madou o rei e arhant ar gampi, o dastum evid eun den hag a vezo trugareg e-keñver ar beorien.

9. Neb a zistro e skouarn evid na glevo ket al lezenn, e vezo argaruz e bedenn.

10. Neb a douell ar re reiz, hag o has en eun hent fall, a gouezo en e boull e-unan ; hag ar re eeun o-deevzo e vadou.

11. An den pinvidig a zo fur war e veno ; hogen ar paour poelleg a hwilio anezañ.

12. Pa vez savet uhel an dud reiz, eo braz ar hloar ; pa ren ar re fallagr, ema an dismantr e-touez an dud.

³⁷⁸ er hleuzeur : an teuzlestr.

³⁷⁹ eul lestr-brev : eul lestr-frika.

13. Neb a guz e dorfejou, n'ez ay ket da vad ; hogen neb o anzav, hag o dilez, en-devezo trugarez.

14. Eüruz eo an den a zo bepred en doujañs ; hogen neb a zo kaled e galon, a gouezo en droug.

15. Evel eul leon a yud, hag eun ours³⁸⁰ naoneg, eo eur priñs fallagr war eur bobl paour.

16. Eur priñs diboell a wasko kalz a dud gand e froudenn ; hogen an hini a gasa ar bizoni a astenno e zeiziou.

17. Neb en-deus skuillet gwad eur re, ha pa dehje beteg ar poull, den ne virje outañ.

18. Neb a vale gand eeunder a vezo salvet ; neb a gerz dre wall heñchou a gouezo eur wech.

19. Neb a labour e zouar, en-devezo e walh a vara ; hogen neb en em ro d'an didalvoudegez, ne gavo nemed an dienez.

20. An den feal a vezo meulet-kaer ; hogen neb a hast da binvidikaad, ne vezo ket dinammm.

21. An hini a zell ouz stad an dud pa varn, ne ra ket mad : hennez evid eur genaouad bara a zilez ar wirionez.

22. Eun den hag a hast da binvidikaad, hag a hirêz ar re all, ne oar ket penaoz e c'hoarvezo an dienez gantañ.

23. Neb a gelenn eun den, a gavo goude-ze gras dirazañ, kentoh eegd an hini a douell anezañ gand lavariou likaouüz ;

24. Neb a skrap eun dra d'e dad pe d'e vamm, hag a lavar penaoz n'eo ket se eur pehed, en-deus e lod el laz-den.

25. Neb a fouge hag a stambouh, a laka strivou da zevel ; hogen neb a laka e hed en Aotrou, a vezo pareet.

26. Neb a laka e fiziañs en e galon e-unan, a zo foll ; hogen neb a gerz gand furnez, a vezo dieubet.

27. Neb a ro d'ar paour, ne gouezo ket en dienez ; neb hen dispriz pa bed anezañ, a houzañvo ar baourentez.

28. Pa vezo savet uhel ar re fallagr, an dud a yelo da guz ; pa'z aint da netra, ar re rezi a gresko e niver.

XXIX. Pennad.

Euz a gelenn ar vugale.

1. An den a zispriz gand eur penn kaled an hini a gelenn anezañ, a gouezo war eun taol en eul lamm marvel, ha ne vezo biken yac'haet.

2. Pa baoto ar re reiz, ar bobl en em laouennay ; pa gemero ar re fallagr ar galloud, ar bobl a geino.

3. An den a gar ar furnez, a laouenna e dad ; hogen neb a vag plahed fall, a gollo e zanvez.

4. Ar roue reiz a starta ar vro ; an den re biz he haso da get.

5. An den a gomz ouz e vignon gand geriou likaouüz ha goloet, a stegn rouejou ouz e dreid.

³⁸⁰ eun ours : eun arz.

6. Ar rouejou a strobo an den fallagr a beh ; hag an den reiz a veulo Doue hag en em laouennay.
7. An den reiz a gemer ali diwar-benn kefridi ar beorien ; an den fallagr ne gemer ali ebed.
8. An dud saotret a zismantr kêr ; hogen ar re fur a zistro ar froudenn.
9. Mar striv an den fur ouz an den foll, pe e vuanekay, pe e c'hoarzo, an den fur ne gavo ket a ehan.
10. An dud a wad o-deus kas ouz an den eeun ; hogen ar re reiz a glask e ene.
11. An den foll a skign kement a zo en e spered ; an den fur a hourzez, hag en em vir evid an amzer da zond.
12. Ar priñs a zelaou a hrad vad ar gevier, n'en-devezo nemed ministred fallagr.
13. Ar paour hag ar hredour a zo en gavet kevred ; an Aotrou a sklêra an eil hag egile.
14. Ar roue a varn ar beorien er wirionez, a welo e dron startaet da viken.
15. Ar wialenn hag ar hastiz a ro ar furnez : hogen ar bugel a vezo lezet d'e youl e-unan, a vezekay e vamm.
16. Pa baoto ar re fallagr, e paoto an droug ; hag ar re reiz a welo o dismantr.
17. Kelenn da vab, hag eñ a frealzo ahanout, hag a roy dudi d'az ene.
18. Pa ne vezo mui a zeskadurez, ar bobl en em vevezo ; hogen an hini a vir al lezenn, a zo eüruz.
19. Ar sklav ne hell ket beza kelennet dre gomziou, rag klevoud a ra ar pezh a leverez hogen fae eo gantañ responta.
20. Ha gwelet eh-eus-te eun den taer da gomza ? Ged kentoh follentez dioutañ, eged gwellaenn.
21. Neb a vag e zervijer gand c'hwekter a-vihanig, her gwelo goude-ze o sevel en e eneb.
22. An den buaneg a laka da zével strivou ; ha neb a zo taer da vuanekaad, a zo taerroh da behi.
23. An dismegañs a yelo war-lerh an den rog ; hag ar hloar a vezo lod an den 'zo izel e galon.
24. Neb a zo kevrenneg da eul laer, a gasa e ene ; klevoud a ra e houlenner le, ha n'hen diskuill ket.
25. Neb a zouj an dud, a gouezo hebdale ; neb a laka e hed en Aotrou, a vezo savet.
26. Meur a hini a glask sell ar priñs ; hogen an Aotrou eo barner peb den.
27. An dud reiz a argarz ar re fallagr ; hag ar re fallagr a argarz ar re a gerz en hent eeun. Ar mab a vir ar ger, ne gouezo ket er gollidigez.

XXX.Pennad.

Tri dra dreist or skiant.

1. Geriou ar stroller, mab ar skigner. Gweledigez eun den, gand pehini ema Doue, ha pehini o veza kreñvaet gand Doue a chom ennañ, en-deus lavaret :
2. An diskianta on euz an dud, ha furnez an dud n'ema ket ganen.
3. N'em-eus ket desket ar furnez, ha ne anavezan ket gouiziegez ar zent.

4. Piou a zo pignet en neñv, hag a zo diskennet ? Piou en-deus dalhet an avel en e zaouarn ? Piou en-deus ereet an doureier evel en eur gwisk ? Piou en-deus startaet oll harzou an douar ? Pe ano eo eñ, ha pe ano eo e vab, ma her gouzoud a rit ?

5. Peb ger Doue a zo leun a dan ; eun direnn eo eñ evid ar re a laka o ged ennañ.

6. Na laka netra ouspenn d'e gomziou, gand aon na vijes tamallet ha kavet gaouiad.

7. Daou dra em-eus goulennet diganez : plijet ganez o rei din a-barz ma varvin.

8. Pella diouzin ar fouge hag ar gevier. Na ro din na paourentez, na madou ; ro din hepken peadra da veva ;

9. Gand aon, pa'm-bezo va gwalh, na zoñjen d'az tilezel ha da lavaroud : Piou eo an Aotrou ? Pe mar kouezan er baourentez, na zeujen da laera ha da derri al le em-eus greet d'am Doue.

10. Na damall ket ar servijer dirag e vestr, gand aon na villige ahanoud ha na gouezjes.

11. Eur ouenn 'zo hag a villig e dad ha na vennig ket e vamm.

12. Eur ouenn 'zo hag a zo glan war he meno, ha pehini koulskoude n'eo ket bet gwalhet euz he nammou.

13. Eur ouenn 'zo hag a zo uhel he daoulagad, ha savet-braz he hrohen-lagad.

14. Eur ouenn 'zo hag he-deus klezeier e-leh dent, pehini gand he hildent a rog hag a zebr ar re davanteg war an douar, hag ar re baour e-touez an dud.

15. Ar helaouenn he-deus diou verh, hag a lavar : Degas, degas. Tri dra 'zo ne dint ket evid kaoud o gwalh ; hag eur pevare, ha na lavar morse : A-walh.

16. An ivern, ar mammou, hag an douar pehini n'en-deus ket a-walh a zour ; hag an tan pehini na lavar morse : A-walh.

17. Lagad an hini a ra goap euz e dad, hag a zispriz gwilioud e vamm, bezet diframmet gand brini ar froudou, ha debret gand mibin an erer.

18. Tri dra 'zo hag a zo diêz din da glevoud ; hag ar pevare, n'e anavezan ket a-grenn.

19. Hent an erer en êr, hent an naer war ar mên, hent al lestr e-kreiz ar mor, hag hent an den en e yaouankiz.

20. Evel-se eo hent ar wreg avoultr, pehini a zebr hag a zeh he genou, hag a lavar : N'em-eus ket greet a zroug.

21. Gand tri dra eo reustlet an douar, hag ar pevare, na hell ket e houzañvi :

22. Gand eur sklav pa ren ; gand eur foll, pa en-deus debret e walh ;

23. Gand eur wreg kasauz, pa he-deus kemeret pried ; ha gand eur vatez, pa eo deuet da herez d'he mestrez.

24. War an douar ez eus pevar dra bihan-meurbed, hag a zo furroh eged an dud fur ;

25. Ar merien, ar bobl dister-ze, pehini a zastum e voued a-zoug an eost ;

26. Ar honikled, ar bobl dinerz-se, pehini a laka e di er rehier ;

27. Ar hilleien-raden pere n'o-deus ket a roue, hag a ya koulskoude oll a-vandennou ;

28. Ar glazard pehini a gerz war e zaouarn, hag a chom e lez ar roue.

29. Tri dra 'zo hag a gerz ervad, hag ar pevare a gerz kaer :

30. Al leon, ar hreñva euz al loened, pehini n'en-deus aon rag netra euz ar pez a gav en e hent ;

31. Ar hillog kreñv en e ellou ; hag an tourh ; hag ar roue ouz pehini na eneb netra.

32. E doare eur foll eo bet kemeret, goude ma eo bet savet en eul leh uhel ; rag ma vije bet fur, en-divije lakaet e zorn war e henou.

33. Neb a wash kreñv war ar vronn, evid tenna al lêz, a laka an dienn da zond ; neb a hwez re greñv e fri, a denn ar gwad ; ha neb a laka da zével ar vuaneged a zegas ar strivou.

XXXI.Pennad.

Meuleudi ar wreg kreñv.

1. Geriou Lamuel, roue. Gweledigez gand pehini he-deus e vamm e zesket.
2. Petra a livirin dit, va mab ker, petra a livirin dit, mab ker va hov, petra a livirin dit, mab ker va gouestlou ?
3. Na ro ket da zanvez d'ar merhed, na da vadou evid kolla ar roueed.
4. Na ro ket, o ! Lamuel, na ro ket a win d'ar roueed ; rag n'eus netra a guzet³⁸¹ el leh ma ren ar vezventi :
5. Gand aon na evjent, ha na ankounac'hajent ar varn, ha na drojent³⁸² kefridi bugale ar paour.
6. Roit bier d'ar re a zo glaharet, ha gwin d'ar re a zo e c'hwevder ar galon.
7. Ra evint, ha ra ankounac'haint o faourentez, ha n'o-devezo mui a goun euz o foan.
8. Digor da henou evid ar mad, hag evid kefridi an oll vugale a dremen.
9. Digor da henou, ha kemenn ar pezh a zo reiz, ha barn gand eeunder ar paour hag an tavanteg.
10. Piou a gavo eur wreg kreñv ? Talvoudusoh eo eged ar pezh a zegaser euz a benn ar bed³⁸³.
11. Kalon heh ozah a laka he fiziañs enni, ha dibourhou ne ziuero ket.
12. Hi a zegaso dezañ ar mad, ha nann an droug e oll zeiziou e vuhez.
13. Hi he-deus klasket ar gloan hag al lin, hag he-deus labouret gand daouarn ijinuz.
14. Hi a zo evel lestr ar marhadour, a zegas e vara a-bell.
15. Hi a zav, ha noz c'hoaz, hag a ro ar preiz d'he faotred, hag ar boued d'he flahed.
16. Hi he-deus sellet ouz eur park, hag he-deus e brenet ; gand frouez he daouarn he-deus plantet eur winienn.
17. Hi he-deus gourizet he dargreiz gand nerz, hag he-deus kreñvaet he breh.
18. Hi he-deus tañvaet, hag he-deus gwelet penaoz e oa mad he hefridi : he hleuzeur ne vouge ket a-zoug an noz.
19. Hi he-deus douget he dorn war an traou kreñv, hag he bizied o-deus kemeret ar werzid.
20. Hi he-deus digoret he dorn d'an tavanteg, hag astennet he falviou d'ar paour.

³⁸¹ netra a guzet : netra kuzet.

³⁸² ha na drojent : ha na vefe dizoñjet ganto...

³⁸³ euz a benn ar bed : euz penn ar bed.

21. Hi n'he-devezo ket a aon rag ar yenijenn hag an erh evid he zi : rag he oll dud o-deus diou zae.

22. Hi he-deus greet eviti pallennou gwele : gand lin moan ha gand limestra eo gwisket.

23. Heh ozah a vezo brudet-braz e-tal ar porz, pa vezo azezet gand henaoured ar vro.

24. Hi he-deus greet eul liñsel, hag he-deus he gwerzet, hag he-deus roet eur gouriz d'ar Hananead.

25. Gand nerz ha gand kaerded eo gwisket ; hag hi a hoarzo en deiz diweza.

26. Digoret he-deus he genou d'ar furnez, ha lezenn ar madelez a zo war he zeod.

27. Sellet he-deus ouz raventchou he zi, ha n'he-deus ket debret he bara en didalvedigez.

28. Savet eo he bugale, hag i o-deus embannet penaoz e oa hi eüruz-braz ; hag heh ozah ivez en-deus he meulet.

29. Kalz merhed o-deus dastumet madou ; hogen te eh-eus o zrehet oll.

30. Touelluz eo ar gened, ha didalvoud ar gaerded ; ar wreg a zouj an Aotrou, honnez eo a vezo meulet.

31. Roit dezi euz a frouez he daouarn ; ha meulet ra vezo hi e-tal ar porz gand heh oberiou.

AN EKLEZIASTES

PE AR PREZEGER

Pennad 1

Avel eo pep tra.

1. Geriou ar Prezeger, mab David, roue e Jeruzalem.
2. Avel an aveliou, eme ar Prezeger, avel an avelou, hag avel pep tra.
3. Petra a zeu d'an den euz an oll labour a ra dindan an heol ?
4. Eur rumm a dremen, hag eur rumm all a zeu : hogen an douar a chom stard da viken.
5. An heol a zav hag a ya da guza, hag e tistro d'e leh kenta : hag oh adsevel ahan,
6. Ez a etrezeg ar hreisteiz, hag e tro etrezeg an hanternoz : an avel a dro a bep tu, hag a zistro warnezañ e-unan, oh ober troiou braz.
7. An oll steriou a ya er mor, hag ar mor ne skuill ket dreist : ar steriou a zistro d'al leh a behini e oant deuet evid redeg adarre.
8. An oll draou a zo diêz ; an den ne hell ket o displega gand e lavariou. N'eo ket gwalhet al lagad o weloud, na leuniet ar skouarn o klevoud.
9. Petra a zo bet ? Ar pezh a vezo. Petra a zo bet greet ? Ar pezh a vezo greet.
10. N'eus netra a-nevez dindan an heol, ha den ne hell lavaroud : Setu eun dra nevez ; rag bez' eo bet kent en amzeriou a zo tremenet en or raog.
11. N'eus ket a eñvor euz an traou kent ; hag ar pezh a dle dond a vezo ankounac'haet gand ar re a zeuy war on lerh.
12. Me, ar Prezeger, a zo bet roue Izrael, e Jeruzalem.
13. Lakaet em-boa em spered enklaskoud ha c'hwilia gand furnez kement a hoarvez dindan an heol. Doue en-deus roet ar gwall breder-ze da vugale an dud evid ma en em rojent d'o anaoud.
14. Gwelet em-eus kement a hoarvez dindan an heol, ha setu eo avel pep tra, ha glahar a spered.
15. Ar re fallagr a zo diêz da reiza, ha braz-meurbed eo niver ar re ziskiant.
16. Komzet em-eus em halon, o lavaroud : Setu me a zo deuet da veza braz, hag eet on er furnez en tu all d'ar re oll a zo bet em raog e Jeruzalem ; ha va spered en-deus gwelet kalz traou gand furnez, hag em-eus desket.
17. Roet em-eus va halon da zeski ar poell hag ar gelennadurez, ar faziou hag ar follentez ; hag em-eus anavezet penaoz e kement-se ez eus ivez poan, ha glahar a spered :
18. Rag gand eur furnez vraz ez euz eun argarzhidigez vraz ; ha neb a gresk e ouiziegez a gresk ivez e boan.

II. Pennad.

Avel an dudiu. Avel er madou.

1. Me em-eus lavaret em halon : deom, en em room d'an dudiu, ha piaouom ar madou, hag em-eus gwelet penaoz eo ivez avel kement-se.
2. Ar c'hoarz em-eus prizet evel eur fazi ; ha d'al levenez em-eus lavaret : Perag en em douellez-te en aner ?
3. Mennet em-eus em halon tenna va hig diouz ar gwin, evid dougen va spered d'ar furnez, ha tehoud diouz ar follentez, ken n'em-bije gwelet petra a zo mad da vugale an dud, ha petra a dleont da ober dindan an heol 'hed oll zeiziu o buhez.
4. Labouriou braz em-eus greet ; tiez em-eus savet evidon ; gwiniennou em-eus plantet.
5. Liorzou ha berjezou em-eus greet, hag em-eus plantet enno gwez-frouez a beb doare.
6. Greet em-eus lennou dour, evid दौरa gwez yaouank ar hoajou.
7. Bet em-eus mevelou ha mitizien, ha kalz a dud all, hag eul lod braz a ejenned hag a zeñved dreist ar re oll a zo bet em raog e Jeruzalem.
8. Dastumet em-eus evidon arhant hag aour, ha danvez ar roueed hag ar proviñsou ; bet em-eus kanerien ha kanerezed, ha kement a zo dudiu da vugale an dud, kopou ha listri evid servija ar gwin ;
9. Ha madou em-eus bet dreist ar re oll a zo bet em raog e Jeruzalem ; hag ar furnez a zo chomet bepred ganen.
10. Kement o-deus c'hoantaet va daoulagad da gaoud, em-eus roet dezo ; n'em-eus ket miret ouz va halon n'en em roje d'al levenez, ha da gement dudi em-boa aozet ; ha me em-boa kredet penaoz e oa va lod tenna frouez euz va oll labouriou.
11. Ha pa em-eus troet va daoulagad etrezeg oll oberiou va daouarn hag etrezeg al labouriou em-boa greet gand kement a hwez didalvez, em-eus gwelet penaoz ne oa enno oll nemed avel ha glahar a spered, ha penaoz ne oa netra a zigeflusk³⁸⁴ dindan an heol.
12. Neuze on troet da arvesti ar furnez, ar faziou hag ar follentez. (Petra eo, emeve, evid ma hellfe heulia ar roue en-deus e grouet ?)
13. Hag em-eus gwelet penaoz ar furnez a zo kement dreist ar follentez, evel ma eo ar goulou dreist an deñvalijenn.
14. Daoulagad an den fur a zo en e benn ; an den foll a vale en deñvalijenn ; ha desket em-eus penaoz e varv an eil hag egile.
15. Hag em-eus lavaret em halon : Mar dlean mervel kerkoulz hag an den foll, petra a dalv din beza bet furroh ? Neuze em-eus lavaret em speerd, penaoz kement-se a oa ivez avel.
16. Rag ne vezo ket peurbaduz eñvor an den fur, kennebeud hini an den foll, hag an amzeriou da zond a holoio pep tra gand an ankounah ; an den gouizieg a varv kerkoulz hag an den diouizieg.
17. Rag se eo deuet kasauz ar vuhez din, pa em-eus gwelet penaoz ema an oll boaniou dindan an heol, ha ma eo pep tra avel ha glahar a spered.

³⁸⁴ netra a zigeflusk : a geflusk.

18. Goude-ze em-eus argarzet an oll breder gand pehini em-eus labouret dindan an heol, evid lezel eur mab en-devezo va madou em goude,
19. Pehini a zeui da vestr war va oll labouriou em-esu greet gand kement a hwez hag a breder, heb ma ouzon pe e vezo fur pe e vezo foll. Hag eun dra 'zo ken aveluz³⁸⁵ ?
20. Dre-ze em-eus ehanet, ha va halon he-deus dihanet pelloh ober labour ebed dindan an heol.
21. Rag goude ma en-deus eur re labouret gand furnez, gand poell, gand preder, e lez ar pez en-deus greet da eun den lezireg : ha kement-se a zo ivez avel, hag eun droug braz.
22. Rag petra a dalvo d'an den e oll labouriou hag e hlahar a spered, gand pere eo bet enkrezet dindan an heol ?
23. E oll zeizioù a zo leun a boan hag a reuz ; ha n'en-deus ket a ehan en e spered a-zoug an noz ; ha n'eo ket avel kementse ?
24. Ha n'eo ket gwelloc'h debri hag eva, hag ober vad d'e ene gand frouez e labouriou ? Ha kement-mañ a zeu euz a zorn Doue.
25. Piou en-devezo e walh hag e zudi eveldon ?
26. Doue en-deus roet d'an den a zo mad dirag e zaoulagad ar furnez, ar ouiziegez, hag al levenez ; hogen d'ar peher en-deus roet ar hlahar hag ar preder didalvez, evid ma vernio ha ma tastumo madou evid beza roet d'an hini a vezo hetuz da Zoue ; hogen kement-se a zo ivez avel, hag eun enkreiz didalvez a spered.

III. Pennad.

Pep tra en-deus e amzer.

1. Pep tra en-deus e amzer, ha pep tra, goude beza bet, a dremen dindan an neñv.
2. Amzer da henel, hag amzer da vervel ; amzer da blanta, hag amzer da denna ar pez a zo plantet ;
3. Amzer da laza, hag amzer da yac'haad ; amzer da ziskara, hag amzer da zevel.
4. Amzer da ouela, hag amzer da hoarzin ; amzer d'en em hlahari, hag amzer da drida ;
5. Amzer da deurel mein, hag amzer d'o dastumi ; amzer da boki, hag amzer da bellaad diouz ar pokou.
6. Amzer da brena, hag amzer da golla ; amzer da viroud, hag amzer da zisteurel ;
7. Amzer da regi, hag amzer da wria ; amzer da devel, hag amzer da gomza ;
8. Amzer evid ar garantez, hag amzer evid ar gasoni ; amzer evid ar brezel, hag amzer evid ar peoh ;
9. Petra a denn an den euz e labour ?
10. Gwelet em-eus an enkreiz en-deus roet Doue da vugale an dud, evid o lakaad da zoania.
11. Kement en-deus greet a zo mad en e amzer, hag ar bed en-deus roet d'o strivou ; hag an den ne anavezo ket koulskoude an oberiou greet gand Doue adaleg ar penn kenta beteg an diweza.

³⁸⁵ aveluz : avelaj .

12. Ha me em-eus anavezet penaoz ne oa netra gwelloh eged en em laouennaad, hag ober ervad en e vuhez.

13. Rag kement hini a zebr hag a ev, hag a denn e vad euz e labour, en-deus kement-se dre eur ro euz a Zoue.

14. Desket em-eus penaoz an oll oberiou en-deus greet Doue, a bado da viken ; ha ne hellom na lakaad ouspenn, na lakaad nebeutoh d'ar pez en-deus greet Doue, evid ma vezo doujet.

15. Ar pez a zo bet, a zo c'hoaz ; ar pez a dle dond, a zo bet kent ; ha Doue a zegas adarre ar pez a oa eet e-biou.

16. Gwelet em-eus dindan an heol ar fallagriez e-leh ar varn, hag an direiz e-leh ar reiz.

17. Hag em-eus lavaret em halon : Doue a varno an den reiz hag an den direiz ; ha neuze e vezo amzer pep tra.

18. Lavaret em-eus em halon diwar-benn bugale an dud, penaoz e arnod Doue anezo, hag e tiskouez penaoz int heñvel ouz al loened.

19. Rag se an dud a varv evel al loened, hag o stad a zo heñvel-heñvel ; evel ma varv an den, e varv ivez al loen ; en eun heveleb doare e tennont o alan an eil hag egile, hag an den n'en-deus netra dreist al loen ; pep tra 'zo avel hag a bleg d'an avel.

20. Ha pep tra a ya etrezeg an heveleb leh ; euz an douar int bet tennet, hag en douar e tistroont adarre.

21. Ene bugale Adam, na piou a oar hag-eñ e pign d'an neh ? Ene an anevaled, na piou a oar hag-eñ e tiskenn d'an traoñ ?

22. Hag em-eus anavezet penaoz n'eus netra gwelloh evid an den eged en em laouennaad en e labour, ha penaoz eo henez e lod. Rag piou a zougo anezañ da anaoud ar pez a hoarvezo e-houde ?

IV. Pennad.

Talvoudegez ar gevredigez.

1. Troet on etrezeg eun tu all, hag em-eus gwelet ar gwaskou a reer dindan an heol, daerou ar re zinamm, pere n'o-deus den evid o dizoania ; hag an dihalloudegez e pehini emaint da enebi ouz ar froudenn, pa n'o-deus skoazell ebed.

2. Ha em em-eus meulet kentoh ar re varo eged ar re veo.

3. Hag eürusoh egeto oll em-eus kavet an hini ha n'eo ket c'hoaz ganet, ha n'en-deus ket gwelet an droug a reer dindan an heol.

4. Gwelet em-eus c'hoaz oll labouriou an dud, hag em-eus anavezet penaoz o ijin a zo erzet gand an nesa ; hag e kement-se ez eus avel ha preder didalvez.

5. An den foll a laka e zaouarn an eil en egile, hag a zebr e gig e-unan, o lavaroud :

6. Gwell eo eun dornad gand ehan, eged daou zornad gand labour ha gand glahar a spered.

7. En eur zelled ouz pep tra em-eus kavet eun avel all dindan an heol.

8. E-unan eo eun den, ha n'en-deus eil ebed, na breur ; ha koulskoude ne ehan ket da laboura, hag e zaoulagad ne dint ket evid kaoud o

gwalh a vadou ; ha ne lavar ket ennañ e-unan : Evid piou e labouran-me, hag e tioueran va ene a vadou ? E kement-se ez eus ivez avel, hag eur gwall hlahar.

9. Gwell eo eta beza daou kevred eged unan ; rag gobr o-deus en o hevredigez.

10. Mar kouez unan, egile hen harpo. Gwa an den e-unan ! rag mar kouez, n'en-devezo den evid e zevel.

11. Mar kouez daou kevred, en em dommint an eil egile ; ma n'eus nemed unan, penaoz e tommo ?

12. Mar deo kreñvoh unan eged eun all, daou a vezo treh dezañ : eur gordenn a dri gor³⁸⁶ a zo diêz da derri.

13. Gwell eo eur bugel paour ha fur, eged eur roue koz ha foll, pehini ne oar ragweloud netra evid an amzer da zond.

14. Rag a-wechou an hini a zo er vah hag er chadennoù, a zeu er-mêz evid beza roue ; hag eun all ganet roue a gouez en davantegez.

15. Gwelet em-eus an oll dud veo a vale dindan an heol gand³⁸⁷ an eil den yaouank a zavo en e leh.

16. Diniver eo an oll bobl³⁸⁸ a zo bet en e raog ; hag ar re a dle dond e houde n'en em laouennaint ket ennañ ; hogen kement-se a zo ivez avel ha glahar a spered.

17. Laka evez peleh e lakaez da droad pa'z ez e ti Doue, ha tosta evid selaoui. Rag gwell eo ar zentidigez eged viktimou ar re ziskiant, pere ne ouoznt ket pe zroug a reont.

V. Pennad.

Reuzeudig eo an den pinvidig e-kreiz e vadou.

1. Na lavar netra gand dievezded, ha na hastet ket da galon da gomza dirag Doue. Rag en neñv ema Doue, ha te a zo war an douar : rag se bezet dibaot da heriou.

2. Ar prederiou braz a zegas an huñvreou hag ar follentez en em gav el lavariou paot.

3. Ma eh-eus greet eur gouestl da Zoue, na zale ket d'e zeveni ; rag ar gouestl disleal ha foll a zo dihetuz dezañ ; hogen pa'z-pezo greet eur gouestl, seven eñ.

4. Gwell eo kalz chom heb ober gouestlou eged ober gouestlou, ha chom heb ober anezo.

5. Na vezet ket da henou e abeg d'az kig da behi ; ha na lavar ket dirag an êl : N'eus ket a ragwel ; gand aon na zavje droug en Aotrou ouz da lavariou, ha na gasje³⁸⁹ ket oll oberiou da zaouarn.

6. El leh ma ez eus kalz a huñvreou, ez eus ivez kalz a avel ha lavariou diniver ; hogen te, douj Doue.

7. Mar gwelez gwaskerez ar beorien, hag ar gwall varnou, ha diskar an den reiz en eur vro, na vez ket souezet gand kement-se : rag an hini a zo uhel en-deus c'hoaz eun all uheloh egetañ, ha re all a zo c'hoaz uheloh eged ar re-mañ.

³⁸⁶ a dri gor : a deir neudenn.

³⁸⁷ gand : mond gand an den yaouank...

³⁸⁸ an oll bobl : an oll dud.

³⁸⁹ na gasje : na zistruje.

8. Hag ouspenn ez eus eur roue hag a hourhemenn war an oll vro a zo dindan e halloud.

9. An den re biz n'en-devezo biken arhant a-walh ; rag an hini a gar ar madou ne denno ket a frouez anezo ; eun avel eta eo ivez.

10. El leh ma ez eus kalz a vadou, ez eus kalz a dud evid o debri. Da betra eta int-i mad d'an hini en-deus anezo, nemed ma wel gand e zaoulagad kalz a vadou ?

11. C'hwek eo ar housk d'an hini a labour, daoust pe e tebr nebeud, pe e tebr kalz ; hogen al leunder a vir ouz an den pinvidig na gousk³⁹⁰.

12. Eur gwall kleñved all a zo c'hoaz, hag em-eus gwelet dindan an heol : madou miret evid enkrez o ferhenn ;

13. Rag mond a reont da get en eur hlahar vraz ; bez' en-deus bet eur mab a gouezo er baourentez ar vrasa.

14. Evel ma eo deuet en noaz euz a gov e vamm, evel-se e tistroio ha ne gaso gantañ netra euz e labouriou.

15. Kleñved truezuz-braz ; evel ma eo deuet, e tistroio. Petra eta a dalv dezañ beza labouret en avel ,

16. E oll zeiziu e vuhez en-deus debret en deñvalijenn, e kalz a brederiou, er reuz hag en doan.

17. Dre-ze eta em-eus kavet mad evid eun den ma tebrje, ha ma evje, ha ma en em laouennaje en e labour a ra dindan an heol, en oll zeiziu en-deus roet Doue dezañ ; rag hennez eo e lod.

18. Ha pa en-deus roet Doue da eun den madou ha danvez, hag ar galloud da zebri anezo, da biaoua e lod, ha d'en em laouennaad en e labour ; kement-se a zo eur ro euz a Zoue.

19. Rag n'en-devezo ket kalz a goun euz e vuhez, pa zeuio Doue da garga e galon a levenez.

VI. Pennad.

Stad truezuz an den re biz.

1. Bez' ez eus c'hoaz eun droug am-eus gwelet dindan an heol, hag a zo paot e-touez an dud :

2. Eun den da behini en-deus roet Doue madou ha danvez hag enor, ha pehini en-deus kement a hoanta da gaoud : a bere n'en-deus ket roet Doue dezañ ar galloud da zebri anezo ; hogen ma vezint lonket gand eun den a-ziavêz : kement-se 'zo avel hag eur reuz braz.

3. Ha pa en-defe ganet eun den³⁹¹ kant mab, ha pa en-defe bevet meur a vloaz, ha ma ve deuet da veza koz ; ma ne denn ket e ene e hounid euz e vadou hag euz e zanvez ; ha mar diouer eur bez ; me a lavar penaoz eur siohan a zo gwelloc'h egetañ.

4. Hag en aner eo eo deuet, hag e kerz en deñvalijenn, hag e ano a vezo kollet en ankounah.

5. N'en-deus ket gwelet an heol, ha n'en-deus ket anavezet ar mad diouz an droug.

³⁹⁰ gousk : na gouskfe.

³⁹¹ ganet eun den : galleg.

6. Ha pa en-defe bevet daou vil bloaz, ma n'en-deus ket perhennet e vadou ; ha n'ez eont ket oll d'an heveleb leh ?
7. Oll labouriou an den a zo evid e henou ; hogen e ene ne vezo ket leuniet.
8. Petra en-deus an den fur dreist an den foll ? Ha petra en-deus ar paour, nemed ma kerz d'al leh ma ema ar vuhez ?
9. Gwell eo gweloud ar pezh a hoantaer, eged c'hoantaad ar pezh ha ne ouezer ket ; hogen kement-se a zo ivez avel hag herrder a spered.
10. Neb a dle beza, a zo a-vremañ anavezet der e ano ; gouzoud a reer penaoz eo eun den, ha penaoz ne hell ket striva e barn a-eneb an hini a zo treh dezañ.
11. Kalz e komzer, kalz a heriou a leverer er striv, hag avel n'int ken.

VII. Pennad.

Talvoudusoh eo ar furnez eged ar madou.

1. Petra 'dalv d'an den klaskoud ar pezh a zo dreistañ, eñ pehini ne oar ket petra a zo talvouduz dezañ en e vuhez, a-hed an deizioù e pere ez eo diavêziad war an douar, e-pad an amzer a dremen evel eur skeud ? Pe piou a hello diskulia dezañ ar pezh a dle beza en e houde dindan an heol ?
2. Gwell eo eun ano mad, eged louzou c'hwez-vad ha talvouduz-braz ; ha deiz ar maro eged deiz ar hanedigez.
3. Gwell eo mond en eun ti-kañv, eged en eun ti banvez ; rag en henez e weler diwez ped den, hag an den beo a laka en e eñvor petra a dle c'hoarvezoud gantañ.
4. Gwell eo ar vuanegez eegd ar c'hoarz ; rag kalon an hini a beh a zo kelennet gand doan an dremm.
5. Kalon ar re fur a zo el leh ma ema an doan, ha kalon ar re foll el leh ma ema al levenez.
6. Gwell eo beza kelennet gand eun den fur eged beza touellet gand likaouerez ar re foll :
7. Rag c'hoaz an den foll a zo evel an trouz a ra ar spern pa loskont dindan eur pod ; hogen avel eo kement-se.
8. An droug-komz a reustl an den fur, hag a ziskar nerz e galon.
9. Gwell eo diwez eul lavar eged e zerou. Gwell eo eun den habask eged eun den rog.
10. Na vez ket taer da vuanekaad ; rag ar vuanegez a gemer heh ehan e askre an den foll.
11. Na lavar ket : Perag eo gwelloc'h an amzeriou kent eged ar re a-vremañ ? Rag n'eo ket fur ar goulenn-ze.
12. Talvoudusoh eo ar furnez gand ar madou, ha gwelloc'h eo evid ar re a wel an heol.
13. Rag evel ma tivenn ar furnez, e tivenn ivez an arhant ; hogen ar ouiziegezh hag ar furnez o-deus kement-mañ ouispenn, ma roont ar vuhez da neb en-deus anezo.
14. Sell ouz oberiou Doue, ha penaoz ne hell ket gwellaad ar pezh en-deus disprizet.

15. Piaou ar madou en deiz mad, ha bez dare evid ar gwall zeiz ; rag evel ma en-deus Doue greet unan anezo, en-deus ivez greet egile, heb ma hell den e damalloud e nep tra.

16. An dra-mañ em-eus gwelet ivez e deizioù va avel ; an den reiz reiz a varv en e reizded, hag an den fallagr a vev pell en e zrougiez.

17. Na vez ket re reiz ; ha na vez ket furroh eged na eo red , gand aon na zeujes da abafi.

18. Na ra ket a fallagriezou ; ha na vez ket foll, gand aon na varvjes kent da amzer.

19. Mad eo dit skaozia an den reiz ; hogen na denn ket da zorn diouz ar re all ; rag neb a zouj Doue ne zilez hini ebed.

20. Ar furnez a greñva an den fur dreist deg priñs eur gêr.

21. Rag n'eus ket eun den reiz war an douar, a raje vad, ha na behje ket.

22. Na lakaet da galon a evez ouz kement a leverer ; gand aon na glevjes da zervijer o villiga ahanout :

23. Rag te a oar en da goustiañs penaoz eh-eus ivez aliez milliget ar re all.

24. Greet em-eus pep tra evid beza fur. Lavaret em-eus : Fur e teuin da veza ; hag ar furnez a zo eet pell diouzin.

25. Pelloh eo eet eged na oa. Gwall zon eo, piou he havo ?

26. Lakaet em-eus va spered da sklêrraad pep tra, evid gouzoud, evid arvesti, evid klaskoud ar furnez hag an abeg ; hag evid anaoud fallagriez ar re foll, ha fazi ar re zievez :

27. Hag em-eus kavet penaoz ar wreg a zo c'hwervoh eged ar maro, lindag ar wenaerien ; penaoz he halon a zo eur roued, hag he daouarn chadennoù. Neb a zo hetuz da Zoue a deho diouti ; hogen ar peher a vezo paket ganti.

28. Setu ar pez em-eus kavet, eme ar prezeger, en eil hag egile, evid kaoud an abeg,

29. A glask c'hoaz va ene, ha n'en-deus ket kavet. E-touez mil gwaz em-eus kavet unan, e-touez ar merhed oll n'em-eus kavet hini ebed.

30. An dra-mañ hepken em-eus kavet, penaoz en-deus Doue greet an den reiz, ha penaoz eo en em reustlet e-unan en eul lod braz a houlennoù. Piou a zo fur a-walh evid kement-mañ ? Piou a anavez diskoulm ar ger-ze ?

VIII. Pennad.

Madelez Doue.

1. Furnez an den a luh en e zremm, hag an Ollhalloudeg a dro an doare anezañ.

2. Evidon-me a vir genou ar Roue, hag ar gourhemennou en-deus roet Doue gand le.

3. Na hast ket en em denna a zirazañ, ha na gendalh ket er gwall-ober ; rag eñ a ray ar pez a garo :

4. Hag e her a zo leun a halloud ; ha den ne hell lavaroud dezañ : Perag e rez-te evel-se ?

5. Neb a vir ar gourhemennou, ne houzañvo droug ebed. Kalon an den fur a boell an amzer hag al lavar.

6. Pep tra en-deus e amzer hag e dro vad, hag eur hlahar vraz eo evid an den,

7. O veza ne oar ket ar pezh a zo tremenet, ha ne hell kaoud kelou ebed euz ar pezh a zo da zond.

8. N'ema ket e galloud an den derhel ar spered ; n'en-deus galloud ebed war deiz ar maro ; ne hell ket kaoud a arsao er brezel a hourdrouz anezañ ; hag ar fallagriez ne denno ket ar fallgar a boan.

9. Kement-se oll em-eus gwelet, hag em-eus roet va halon da gement a reer dindan an heol. A-wechou e teu eun den da aotrounia eun all en e zroug e-unan.

10. Gwelet em-eus tud fallagr beziet, pere pa oant c'hoaz beo, a oa el leh santel, hag a oa meulet e kêr, evel pa vije bet reiz o oberiou ; hogen kement-se a zo ivez avel.

11. Rag o veza n'eo ket douget raktal ar varn a-eneb ar re zroug, bugale an dud a ra an droug heb aon ebed.

12. Koulskoude pa welan ar madelez-se e-keñver ar peher, pehini en-deus gwall-hreet kant gwech, eh anavezan penaoz e teuo vad d'ar re a zouj Doue hag a enor anezañ.

13. Na vezet ket a vad d'an den fallagr, ha na vezet ket hirraet e zeiziu ; hogen ra dremeno evel eur skeud ar re na zoujont ket dremm an Aotrou.

14. Bez' ez eus c'hoaz eun avel all hag a hoarvez war an douar ; bez' ez eus tud reiz, war bere e kouez ar reuziu, evel pa o-defe greet oberiou ar re fallagr ; ha bez' ez eus tud fallagr, pere a vev er fiziañs, evel pa o-defe greet oberiou an dud reiz ; hogen kement-se a zo avel, war va meno.

15. Meulet em-eus eta al levenez ; hag em-eus lavaret penaoz ne oa netra gwelloc'h evid an den dindan an heol nemed debri, hag eva, hag en em laouennaad ; ha penaoz ne gase an den gantañ nemed se, euz al labour en-doa greet en e vuhez a-zoug an deiziu en-doa roet Doue dezañ.

16. Hag em-eus lakaet va halon da anaoud ar furnez, ha da boellaad ar gildroidigez a weler war an douar. Tud a zo ha ne gouskont na deiz na noz.

17. Hag em-eus anavezet penaoz an den ne hell kavoud abeg ebed euz an oll oberiou a ra Doue dindan an heol ; ha penaoz seul-vui e strivo evid e glaskoud, seul nebeutoc'h e gavo ; ha pa lavarfe an den fur penaoz e oar kement-se, ne hello ket e gavoud.

IX. Pennad.

Ober vad endra ma heller e ober.

1. Kement-se oll em-eus mennet em halon, evid o foella gand preder. Bez' ez eus tud reiz ha tud fur, hag o oberiou a zo e daouarn Doue ; ha koulskoude an den ne oar ket pe e tellez ar garantez, pe ar gasoni ;

2. Hogen pep tra a zo miret evid an amzer da zond, hag a chom arvaruz amañ, o veza ma c'hoarvez pep tra en eun doare kevatal gand an den reiz ha gand an den direiz, gand an den mad ha gand an den fall, gand an den glan ha gand an den dihlan, gand an hini a laz viktimou ha gand an hini a zispriz ar sakrifisou. Evel ema an den mad, ema ivez ar peher ; neb a dou e gaou, evel neb a dou e gwirionez.

3. Setu petra a zo ar gwasa er pezh a hoarvez dindan an heol, ma teu pep tra en eun doare kevatal da bep hini ; hag ahano e teu kalonou bugale an dud da veza leun a zrougiez, hag a zispriz 'hed o buhez ; ha goude-ze e vezint lakaet e-touez ar re varo.

4. N'eus den hag a vevje bepred, nag en-defe zoken ar fiziañs euz a gement-se ; gwell eo eur hi beo eged eul leon maro.
5. Rag ar re veo a oar penaoz e tleont mervel ; hogen ar re varo ne anavezont mui netra, ha n'o-deus mui a gobr : rag an eñvor anezo a zo roet d'an ankounah.
6. Ar garantez, ar has, hag an erez a zo eet da get ganto, ha n'o-deus mui a lod er bed-mañ, nag e kement a hoarvez dindan an heol.
7. Kee eta ha debr da vara gand dudi, hag ev da win gand levnez ; rag da oberiou a zo hetuz da Zoue.
8. Bezet gwenn da zillad e peb amzer, ha na zioueret ket an eoul war da benn.
9. Bev laouen gand ar wreg a garez, a-zoug an deziou euz da vuhez berrbaduz, a zo bet roet dit evid an oll amzer euz da avel ; rag hennez eo da lod er vuhez-mañ, hag el labour eh-eus da ober dindan an heol.
10. Gra buan kement ha ma hello ober da zorn ; rag ne vezo mui na labour, na reiz, na furnez, na gouiziegez er bez, etrezeg pehini en em hastez da vond.
11. Troet on en eun tu all, hag em-eus gwelet penaoz n'eo ket ar red evid ar re skañva, nag ar brezel evid ar re greñva, nag ar bara evid ar re fur, nag ar madou evid ar re zesket, nag ar hard-vad evid ar vicherourien ; hogen ez a pep tra diouz an amzer hag an darvoud.
12. An den ne anavez ket e ziwez : hag evel ma paker ar pesked gand an higenn, hag al laboused gand ar rouejou, evel-se an dud a zo paket gand ar gwall amzer, pa en em daol warnezo raktal.
13. Gwelet em-eus ivez ar furnez-mañ dindan an heol, hag em-eus kavet e oa braz :
14. Eur gêr vihan, ha nebeud a dud enni ; eur roue braz a zeuas en heh eneb, hag a gelhias anezi ; sevel a reas kreñvou tro-war-dro, hag e stourmas outi.
15. En em gavet eo bet enni eun den paour ha fur, pehini en-deus dieubet kêr dre e furnez ; ha den goude-ze n'en-deus bet a eñvor euz an den paour-ze.
16. Ha me a lavaras penaoz e oa gwelloh ar furnez eged an nerz ; penaoz eta eo bet disprizet furnez ar paour, ha n'eo ket bet selaouet e heriou ?
17. Geriou ar re fur a glever pa ne vez trouz, kentoh eged garm ar priñs e-touez ar re foll.
18. Gwell eo ar furnez eged armou brezel ; ha neb a beho en eun dra, a gollo kalz a vadou.

X. Pennad.

Penaoz eh anavezer an droug-prezezer.

1. Ar helien a varv en traet, a wall ar blaz anezañ. Eun diboell skañv ha berrbaduz, a zo treh d'ar furnez ha d'ar hloar.
2. Kalon an den fur a zo en e zorn dehou, ha kalon an den foll en e zorn kleiz.
3. An den foll a vale en e hent, o veza ma eo foll e-unan, a gred penaoz eo foll ar re all oll.
4. Mar sav dreistout an hini en-deus ar galloud, na fiñv ket euz da leh ; rag ar wellaenn a lakay da ehana pehejou braz.
5. Eun droug a zo em-eus gwelet dindan an heol, hag en-deus an doare da zond euz a fazi ar priñs :
6. An den foll lakaet en eur garg uhel, hg ar re binvidig azezet izel :

7. Gwelet em-eus ar sklaved war varh, hag ar briñsed o kerzoud war droad evel sklaved.

8. Neb a doull ar poull, a gouezo ennañ . ha neb a freuz ar hae, a vezo flemmet ennañ gand an naer..

9. Neb a zoug ar vein, a vezo bloñset ganto ; ha neb a faout ar heuneud, a vezo gloazet gantañ.

10. Mar deo tougnet an houarn, hag e-leh e lakaad en e stad kenta, ma e dougner adarre, e vezo diêz e lemma ; evel-se ar furnez ne zeu nemed goude eul labour braz.

11. Neb a zrougprezeg e kuz, a zo heñvel ouz eun naer a flemm didrouz.

12. Geriou genou an den fur a zo leun a hras : ha muzellou an den foll hel lakay da goueza.

13. E heriou kenta eo follentez, hag e heriou diweza ar gwsa fazi.

14. An den foll a baot ar geriou. An den na oar ket petra a zo en e raog, ha piou a hello disklêria dezañ ar pezh a vezo en e houde ?

15. Labour ar re foll a hlaharo anezo, o veza na ouzont ket penaoz mond da gêr.

16. Gwa te, o ! douar, ma eh-eus eur bugel da roue, ha priñsed hag a zebr diouz ar mintin.

17. Eüruz eo an douar, mar en-deus eur roue a ouenn vraz, ha priñsed hag a zebr en amzer red evid en em vaga, ha nann evid likaoui.

18. Framm an ti a vezo gwallet gand an diegi, hag en abeg d'an daouarn laosk e kouezo glao dre an ti oll.

19. Ober a reont ar bara hag ar gwin, evid beva er c'hoarz hag er banveziou ; ha pep tra a zent ouz an arhant.

20. Na wallgomz ket diwar-benn ar roue en da vennoz, hag na villig ket ar re binvidig el leh kuzeta euz da gambr ; rag evned an neñv o-unan a gaso da vouez, hag ar re o-deus diouaskell a embanno da lavar.

XI. Pennad.

Red eo kaoud koun euz ar maro hag euz ar varn.

1. Laka da vara war an doureier red ; rag e gavoud a ri goude kalz a amzer.

2. Gra anezañ seiz rann, hag eiz ; rag ne ouzout ket pe zroug a hoarvezo war an douar.

3. Mar bez leun ar hoabr, e skuillint glao war an douar. Mar kouez ar wezenn war-zu ar hreisteiz pe an hanternoz, e peleh bennag e vezo kouezet, e chomo eno.

4. Neb a laka evez ouz an avel, ne had ket ; ha neb a zell ouz ar hoabr, ne vedi biken.

5. Evel na ouzout ket dre be hent e teu an ene, ha penaoz en em framm an eskern e kov eur wreg brazez, evel-se ne ouzout ket oberiou Doue, pehini eo an oberer euz a bep tra.

6. Had da had diouz ar mintin, ha na ehanet ket da zorn diouz ar pardaez ; rag ne ouzout ket pehini a zavo da genta, hemañ pe hennez ; ha mar savont o-daou, e vezo c'hoaz gwelloc'h.

7. C'hwek eo ar goulou, hag eun dra dudiuz eo d'an daoulagad gweloud an heol.

8. Mar bev eun den kalz a vloaveziou, ha mar bez laouen enno, e tle kaoud koun euz an amzer a deñvalijenn-ze, hag euz al lod braz a zeiziou ; pere pa vezint deuet, a ziskouezo penaoz n'eo nemed avel kement a zo tremenet.

9. En em laouenna eta, den yaouank, en da yaouankiz, ha ra vezo da galon eun dudi e deiziou da yaouankiz : ha bale e heñchou da galon, hag e gwel da zaoulagad ; ha gouez penaoz Doue az kaso er varn evdid kement-se oll.

10. Kas kuit ar vuanegez euz da galon, ha pella an drougiez euz da gig ; rag ar yaouankiz hag an dudi n'int nemed avel.

XII. Pennad.

Na hortoz ket ar gozni evid heulia lezenn an Aotrou.

1. Az-pezh koun euz da grouer e deiziou da yaouankiz, a-barz ma teuio amzer ar halhar, ha ma nesay ar bloaveziou, diwar-benn pere e liviri : Ne blijont ket din.

2. A-barz ma teñvallaay an heol, hag ar goulou, hag al loar, hag ar stered, ha ma tistroy ar hoabr goude ar glao :

3. Pa greno ar re a vir an ti, ha pa horello an dud ar re greñva, ha pa vezo deuet da ehana ha da veza dibaot ar re a vale : ha pa vezo goloet a deñvalijenn ar re a zelle dre an toullou ;

4. Pa vezo serret doriou ar ru ; pa vezo izel mouez an hini a vale ; pa zavor diouz kan an evned ; ha pa zeu merhed ar zon da veza bouzar :

5. Euz al lehiou uhel o-devezo aon, hag e spontint en hent ; ar wezenn alamandez a vleuñvo, ar hillog-raden a lardo, ar haprez a yelo da get : o veza ma'z ay an den da di e berur-badelez, ha ma vezo baleet eun eur leñva dre ar ruou.

6. A-barz am vezo torret ar gordennig arhant, ha ma vezo en em dennet an taled aour, ha ma vezo brevet ar brok war ar feunteun, ha ma vezo torret ar rod war ar puñs,

7. Ha ma tistroy ar poultr d'an douar a behini e oa bet tennet, ha ma'z ay adarre ar spered etrezeg Doue, pehini en-doa e roet.

8. Avel an avelou, eme ar prezeger, hag avel pep tra.

9. Hag o veza ma oa fur-braz ar prezeger, e teskas ar bobl, hag eh embannas ar pez en-doa greet ; ha gand e enklaskou e reas kalz a barabolennou.

10. Geriou gouniduz e klaskas, hag e skrivas lavariou eeun, ha leun a wirionez.

11. Geriou ar re fur a zo evel broudou, hag evel tachou sanket don, a zo bet roet deom gand ar mesaer dre guzul ar vistri.

12. Na enklask netra ken, va mab. N'eus diwez ebed oh ober kalz levriou ; hag ar poellad hirbaduz a hlahar ar hig.

13. Selaouom oll kevred an diwez euz al lavar-mañ. Douj Doue, ha mir e hourhemennou, hennez eo oll zlead an den.

14. Ha Doue a zegaso d'ar varn an oll faziou, ar mad hag an droug a vezo bet greet.

KANAOUENN SALOMON

Pennad

34. Ra boko din gand eur pok euz e henou ; rag da zivronn³⁹² a zo gwelloh eged ar gwin ;

35. Hag ar c’hwez anezo evel al louzou ar re hweka. Evel eoul skuillet eo da ano ; rag se e kar ar plahed yaouank ahanout.

36. Dedenn ahanon ; ni a redo war da lerh diouz ar c’hwez euz da louzou mad. Ar roue en-deus va lakaet da vond en e gambrou : trida a raim, hag en em laouennaim ennout, pa zeuy da goun deom penaoz da zivronn a zo gwelloh eged ar gwin.

37. Du on, hogen kaer on, merhed Jeruzalem, evel teltou Sedar, evel tinellou Salomon.

38. Na likiit ket a evez ouzin o veza ma’z on demzu ; rag an heol eo en-deus va dislivet ; merhed va mamm o-deus stourmet ouzin : va lakaet o-deus evid diwalloud ar gwiniennou ; ha n’em-eus ket diwallet va gwinienn va-unan.

39. Diskouez din, te pehini a gar va ene, peleh e kasez da zeñved da beuri, peleh e hourvevez diouz ar hreisteiz³⁹³, gand aon na zeujen da fazia oh heulia tropellou da eiled³⁹⁴.

40. Ma n’em anavezet ket, o ! ar gaerra e-touez ar merhed, kee er-mêz, hag heuill an tropellou, ha kas da vened da beuri e-tal teltou ar vesaerien.

41. O ! va mignonez, da lakaet em-eus keit ha va hezeg sternet ouz kirri Faraon.

42. Kaer eo da zivoh evel eun durzunell ; ha da houzoug evel kelhennou.

43. Chadennou aour marellet gand arhant a raim dit.

44. Pa edo gourvezet ar roue, va nard³⁹⁵ en-deus roet e hwez.

45. Va mignon a zo din evel eur vodennig mirr³⁹⁶, etre va divronn e chomo.

46. Va mignon a zo din evel eur bod rezin Sipr, e gwiniennou Engaddi.

47. Setu te a zo kaer, va mignonez, setu te a zo kaer ; da zaoulagad a zo evel re ar houlmed.

48. Setu te a zo kaer ha koant, va mignon. Or gwele a zo goloet a vleuñv.

49. A goad sedr³⁹⁷ eo kebrou on tiez, hag or hoadañ a goad siprez³⁹⁸.

II. Pennad.

³⁹² da zivronn : iskiz a-berz eur plah a gomz ouz eur paotr. E skrdiou e yezou all e reer gand ar ger “karantez”.

³⁹³ diouz ar hreisteiz : da greisteiz.

³⁹⁴ eiled : souezuz eur seurt implij. eilerien.

³⁹⁵ nard : louzou c’hwez-vad.

³⁹⁶ mirr : louzou c’hwez-vad.

³⁹⁷ sedr : koad sedr (koad brao-kenañ).

³⁹⁸ siprez : koad siprez (koad brao-kenañ).

36. Me eo bleuñvenn ar park, ha lili an traoniennou.
37. Evel al lili e-kreiz ar spern, evel-se ema va mignonez e-kreiz ar merhed.
38. Evel eur wezenn-avalou e-kreiz gwez ar hoajou, evel-se ema va mignon e-kreiz ar vugale. Dindan skeud an hini em-oa c'hoantaet on bet azezet ; hag he frouez a oa c'hwek d'am genou.
39. Va lakaet en-deus da vond e ti ar gwin , ar garantez en-deus reizet ennon.
40. Skoazellit ahanon gand bleuñ, kreñvait ahanon gand frouez ; rag klañv on gand ar garantez.
41. E zorn kleiz a laka dindan va fenn, ha gand e zorn dehou e vriata ahanon.
42. Merhed Jeruzalem, me ho ped stard dre ar menned-gevr ha dre girvi ar parkou, na zihunit ket va mignonez, ha na likiit ket anezi da zivoredi, ken na zihuno anezi heh-unan.
43. Me a glev mouez va mignon, setu eñ a zeu, en eur lammoud war ar meneziou, en eur zaill dreist ar hrehiennou.
44. Va mignon a zo heñvel ouz eun tourh, hag ouz menn eur harvez ; setu eñ a zo en e zav e-tal or moger, o selloud dre ar prenestou, oh arvesti a-drezuz ar sparlou.
45. Setu va mignon a lavar din : Sao, hast, va mignonez, va houlm, va hoantiz, ha deus.
46. Rag setu ar goañv a zo eet e-biou, tremenet eo ar glao, hag eo eet kuit.
47. Ar bleuñv en em ziskouez war on douar, deuet eo pred ar skej ; klevet eo bet mouez an durzunell en on douar.
48. Ar wezenn-fiez a ziskouez he fiez nevez ; ar gwiniennou a zo goloet a vleuñv, hag a ro c'hwez vad. Sao, va mignonez, va hoantiz, ha deus.
49. Va houlm, te pehini a zo e toullou ar mên, e kleuz ar voger, diskouez din da zremm, ro da glevoud din da vouez ; rag da vouez a zo c'hwek, ha da zremm a zo kaer.
50. Kemerit deom al lern bihan, pere a wast ar gwiniennou ; rag or gwinienn a zo goloet a vluñv.
51. Va mignon a zo din, ha me dezañ, eñ pehini en em vag e-touez al lili.
52. Ken n'en em ziskouezo an deiz, ha ma'z ay an deñvalijenn e-biou. Distro ; bez heñvel, va mignon, ouz eur yourh, hag ouz menn eur harvez war meneziou Beter.

III. PENNAD.

1. A-zoug an nozveziou em-eus klasket em gwele an hini a gar va ene ; e glasket em-eus, ha n'em-eus ket e gavet.
2. Sevel a rin, hag ez in tro-war-dro da gêr ; dre ar ruou ha dre al leuriou-kêr e klaskin an hini a gar va ene ; e glasket em-eus, ha n'em-eus ket e gavet.
3. Ar warded pere a ziwall kêr, a zo en em gavet ganen : Ha n'hoh-eus ket gwelet, emeve, an hini a gar va ene ?
4. Eun nebeud goude am oan eet e-biou dezo, em-eus kavet an hini a gar va ene ; e zalhet em-eus, ha n'hel laoskin ket da vond kuit, ken n'em-bezo e lakaet da vond e ti va mamm, e kambr an hini he-deus va ganet.
5. Merhed Jeruzalem, me ho ped stard dre ar menned-gevr ha dre girvi ar parkou, na zihunit ket va mignonez, ha na likiit ket anezi da zivoredi, ken na zihuno anezi heh-unan.

6. Piou eo hounnez a zav euz an distro, evel eur peul moged a zav euz al louzou kreñv, euz ar mirr, euz an ezañs, hag euz an oll boultrou c’hwez-vad ?

7. Setu gwele Salomon war-dro da behini ez eus tri-ugent den euz ar re greñva euz a Izrael :

8. Pere oll a zoug klezeier, hag a zo gouizieg-braz e-keñver ar brezel ; pep hini anezo en-deus e gleze war e vorzed gand aon rag ar spontou noz.

9. Ar roue Salomon en-deus greet eul leter evitañ gand koad al Liban.

10. Ar peuliu anezañ en-deus greet gand arhant, ar hein gand aour, ar gador gand limestra : hag ar hreiz anezañ en-deus kinklet en eun doare kaer en abeg da verhed Jeruzalem.

11. Deuit er-mêz, merhed Sion, ha gwelit ar roue Salomon gand ar gurunenn he-deus lakaet e vamm war e benn e deiz e eured hag e deiz levenez e galon.

IV. Pennad.

1. Peger kaer out, va mignonez, peger kaer out ! Da zaoulagad a zo evel ar houlmed, heb ar pez a zo kuzet en diabarz. Da vleo a zo evel tropellou gevr, a zo pignet war menez Galaad.

2. Da zent a zo evel tropellou deñved touzet, pere a zo pignet euz ar gwall-houer³⁹⁹, pere a zoug oll daou oan, hag e-touez pere n’eus hini brehagn.

3. Da vuzellou a zo evel eun taled tane ; ha da lavar a zo c’hwek. Da zivoh a zo evel darn eun aval-grenad, heb ar pez a zo kuzet en diabarz.

4. Da houzoug a zo evel tour David, a zo bet savet gand kreñvou : mil tirenn a zo krouget outañ, gand oll armou ar re greñv.

5. Da zivronn a zo evel daou venn gevel eur yourhez o peuri e-touez al lili.

6. Ken n’en em ziskoueze an deiz, ha ma’z ay an deñvalijenn e-biou, me a yelo da venez ar mirr, ha da grehienn an ezañs.

7. Kaer oll out, va mignonez, ha n’eus ket a namm ennout.

8. Deus euz al Liban, va fried, deus euz al Liban, deus ; kurunet e vezi ; deus euz a lein Amana, euz a lein menez Sanir hag Hermon, euz a geviou al leoned, euz a veneziou al leoparded.

9. Gloazet eh-eus va halon, va hoar, va fried, gloazet eh-eus va halon gand unan euz da zaoulagad, ha gand unan euz a vleo da houzoug.

10. Peger kaer eo da zivronn, va hoar, va fried ! Kaerroh eo da zivronn eged ar gwin, ha c’hwez da dretou a zo dreist an oll louzou c’hwez-vad.

11. Da vuzellou, va fried, a zo evel eun direnn a ziver ar mel, ar mel hag al lêz a zo dindan da deod ; ha c’hwez da zillad evel c’hwez an ezañs.

12. Eul liorz serret eo va hoar, va fried, eul liorz serret, eur feunteun ziellet.

13. Da blantou a zo evel eul liorz leun a avalou-grenad, hag ar frouez all a Zipr, a nard,

14. A nard hag a zafran, a raoz hag a zinnamon, gand oll wez al Liban, ar mirr hag an aloez, gand an oll louzou euz ar re wella.

15. Feunteun al liorzou, puñs an doureier beo, a ziver gand herr euz al Liban.

16. Sao, avel an hanternoz, ha deus, avel ar hreisteiz, c’hwez war va liorz, ma tivero an tretou c’hwek dioutañ.

³⁹⁹ ar gwall-houer : al laouer.

V. Pennad.

1. Deuet va mignon en e liorz, ha debret frouez euz e wez. Deuet on em liorz, va hoar, va fried, kutuillet em-eus va mirr gand va louzou c'hwez-vad ; debret em-eus an direnn gand va mel, evet em-eus va gwin gand va lêz ; debrit, va mignoned, hag evit, evit ho kwalh, va mignoned ker.

2. Me a gousk, ha va halon a zo dihun ; me a glev mouez va mignon a stok : Digor din, va hoar, va mignonez, va houlm, va dinamm ; rag va fenn a zo goloet a hliz, hag ar bleo gand ar banneou dour euz an noz.

3. Diwisket em-eus va zae, penaoz he gwiskin-me ? Gwalhet em-eus va zreid, penaoz e saotrin-me anezo ?

4. Va mignon en-deus tremenet e zorn dre doull an nor, ha va bouzellou a zo bet strafuillet gand an trouz en-deus greet.

5. Me a zavas evid digeri d'am mignon : ar mirr a zivere euz va daouarn, ha va bizied a oa leun euz a virr ar c'hweka.

6. Prenn va dor a zigoris d'am mignon ; hogen eñ a oa eet kuit, eet e oa e-biou. Va ene a zo bet evel teuzet ; kerkent ha ma en-deus komzet, e glaskoud a ris, hag n'her havis ket ; e hervel a ris, ha ne respontas ket ouzin.

7. Ar warded a ra an dro euz a gêr o-deus va havet ; skoet o-deus ganen, hag o-deus va gloazet ; gwarded ar muriou o-deus tennet va mantell diganen.

8. Merhed Jeruzalem, me ho ped stard, ma kavit va mignon, da rei da anaoud dezañ penaoz on klañv gand ar garantez.

9. Pehini eo da vignon dreist ar vignoned all ; o ! ar gaerra euz ar merhed ? Pehini eo da vignon dreist ar vignoned all, pa or pedez ker stard ?

10. Va mignon a zo gwenn ha ruz ; dilennet eo etre mil.

11. E benn evel aour ar glanna ; e vleo evel skourrouigou palmez, du evel ar vran.

12. E zaoulagad evel ar houllmed war dour ar goueriu, a zo bet gwalhet el lêz, hag a chom war-hed ar froudou braz.

13. E zivoh evel eur pengenn louzou c'hwez-vad, plantet gand louzaouerien ; e vuzellou evel lili a ziver mirr ar gwella.

14. E zaouarn evel aour turgnet, leun a hiasintuz⁴⁰⁰ ; e gov evel olifant, kinklet gand safirou.

15. E zivesker evel peuliu marbr, a zo diazezet war steudennou aour ; e zremm evel al Liban, dilennet evel ar gwez-sedr.

16. Son e vouez a zo c'hwek-braz, hag eñ a zo hegarad oll. Setu penaoz eo va muia-karet, an hini a zo mignon din, o ! merhed Jeruzalem.

17. Peleh eo eet da vignon, o ! ar gaerra euz ar merhed ? War be du eo en em dennet da vignon ? Ma'z aim d'e glaskoud ganez.

VI. Pennad.

1. Diskennet eo va mignon en e liorz, e pengenn al louzou c'hwek, evid en em vaga en e liorzou, ha kutuilla lili.

2. D'am mignon on, ha va migon a zo din, eñ pehini en em vag e-touez al lili.

⁴⁰⁰ hiasintuz : louzouenn ar goukoug.

3. Kaer out, va mignonez, ha kuñv, ha koant evel Jeruzalem, hag eüruz evel eun arme dare d'ar stourm.
4. Distro da zaoulagad diouzin, rag i eo o-deus va lakaet da dehoud. Da vleo a zo evel eun tropell gevr a zo en em ziskouezet o tond euz a Halaad.
5. Da zent a zo evel eun tropell deñved, pere a zo pignet euz ar gwall-houer, pere o-deus daou oan pep hini, hag e-touez pere n'eus hini brehagn.
6. Da zivoh a zo evel rusk eun aval-grenad, heb ar pezh a zo kuzet ennout.
7. Bz' ez eus tri-ugent rouanez, ha pevar-ugent serh, ha plahed-yaouank heb niver.
8. Unan hepken eo va houlm, va hlok, heh-unan eo d'he mamm, dilennet eo gand an hini he-deus he ganet. Ar merhed o-deus he gwelet, hag i o-deus embannet penaoz e oa eüruz-braz ; ar rouanezed hag ar serhed, hag i o-deus he meulet.
9. Piou eo houmañ a zeu evel goulou-deiz pa zav, kaer evel al loar, skeduz evel an heol, euzuz evel eun arme dare d'ar stourm ?
10. Diskennet on e liorz ar hraoñ, evid gweloud frouez an traoniennou, evid gweloud hag ar bleuñv 'oa deuet er winienn ; evid gweloud hag ar gwez-grenad a oa deliaouet.
11. N'em-eus ket gouezet ; reustlet eo bet va ene ennon, en abeg da girri Aminadab.
12. Distro, distro, o ! Sulamitez ; distro, distro, evid ma sellim ouzit.

VII. Pennad.

1. Petra a weli-te er Sulamitez, nemed kann an armeou ? peger kaer eo da gerzed gand da voutou, merh ar priñs ? Frammou da zivorzed a zo evel kelhennou greet gand daouarn eun oberour gwen⁴⁰¹.
2. Da vegel a zo evel eur hop turgnet, e pehni ez eus bepred da eva. Da gov a zo evel eur bern gwiniz, ha lili tro-war-dro.
3. Da zivronn a zo evel daou venn gevell eur yourhez.
4. Da houzoug a zo evel eun tour olifant. Da zaoulagad a zo evel ar hibellou a zo e Hesebon, e-tal porz an engroez. Da fri a zo evel tour al Liban, a zell ouz Damas ;
5. Da benn a zo evel ar Harmel ; ha bleo da benn evel moug ar roue ereet ha livet er haniou⁴⁰².
6. Peger kaer, ha peger koant out, va mignonez ker, ha va dudi !
7. Da vent a zo heñvel ouz eur wezenn-balmez, ha da zivronn ouz bodou rezin.
8. Lavaret em-eus : War ar wezenn-balmez e pignin, hag e kutuillin he frouez ; ha da zivronn a vezo evel bodou rezin ; ha c'hwez da henou evel hini an avalou.
9. Da hargadenn a zo evel gwin ar gwella, hag a zellez beza evet gand va mignon, goude beza e dañvaet etre e vuzellou hag e zent.
10. Me a zo d'am mignon, hag eñ a dro etrezeg ennon.
11. Deus, va mignon, deom d'ar mêziou, ha chomom er bourhiou.

⁴⁰¹ gwen : ? Eun arzour (?).

⁴⁰² er haniou : ? bouklou (?)

12. Savom mintin mad evid mond d'ar gwiniennou ; gwelom hag ar winienn a zo bleuñvet, hag ar bleuñv a ro frouez, hag ar gwez-grenad a zo bleuniet ; eno e roin dit va divronn.

13. Ar mandragorou o-deus roet o hwez. An oll frouez a zo ouz on doriou ; ar re nevez hag ar re goz am-eus miret evidout, va mignon.

VIII. Pennad.

1. Piou az lakay da veza breur din, ha da zena divronn va mamm, evid ma'z kavin er-mêz, ma pokin dit, ha ne vezin mui disprizet gand den ?

2. Me az kemero, hag a gaso ahanout e ti va mamm : eno e teski ahanon hag e roin dit da vraoued gwin gand louzou c'hwez-vad, ha sun va avalou-grenad.

3. E zorn kleiz a laka dindan va fenn, ha gand e zorn dehou e vriata ahanon.

4. Merhed Jeruzalem, me ho ped stard, na zihunit ket va mignonez, ha na likiit ket anezi da zivoredi, ken na zihuno anezi heh-unan.

5. Piou eo houmañ, pehini a zav euz an distro, leun a zudi, harpet war he mignon ? Dindan ar wezenn-avalou em-eus da adsavet : eno eo bet saotret da vamm, eno eo bet gwallet an hini he-deus va hanet.

6. Laka ahanon evel euz ziell war da galon, evel eur ziell war da vreh : rag ar garantez a zo kreñv evel ar maro, hag an oaz a zo didruez evel an ivern : he hleuzeuriou a zo kleuzeuriou tan ha flammou.

7. An doureier braz n'o-deus ket gellet mouga ar garantez, hag ar steriou ne drehint ket anezi ; ha pa en-defe roet eun den oll zanvez e di evid ar garantez, e tisprizje anezañ evel netra.

8. Or c'hoar a zo bihan, ha n'he-deus ket a zivronn : petra a raim-ni d'or c'hoar, en deiz e pehini e vezo red komza outi ?

9. Mar deo eur vur, e savim warnezi kreñvou arhant ; mar deo eun nor, e serrim anezi gand elfennou gwez-sedr.

10. Eur vur on ; ha va divronn a zo evel eun tour, abaoe ma on en em ziskouezet dirazañ goude beza kavet ar peoh.

11. An den a beoh en-deus bet eur winienn, en enni en-deus kalz a boblou : he roet en-deus evid beza diwallet : peb den a zegas mil pez arhant evid he frouez.

12. Va gwinienn a zo dirazon. Mil pez arhant a zo evidout, o ! peohuz, ha daou-hant evid ar re a ziwall he frouez.

13. Te pehini a chom el liorzou, or mignoned a zelaou : va laka da glevoud da vouez.

14. Teh, va mignon, ha bez heñvel ouz eur yourh, hag ouz menn eur harvez war meneziou al louzou c'hwez-vad.

Levr ar furnez

Pennad

Ar maro ne zeu ket a-berz Doue.

1. Karit ar reiz, c'hwi pere a varn an douar. Ho-pezet mennoziou mad e-keñver an Aotrou, ha klaskit eñ gand eur galon eeun :
2. Rag kavet e vez gand ar re na demptont ket anezañ : hag eñ en em ziskouez d'ar re o-deus fiziañs ennañ.
3. Rag ar gwall mennoziou a bella diouz Doue ; ha neb a dempt e halloud a vez kendrehet war follentez ;
4. Rag ar furnez n'ez ay ket en eur gwall ene, ha ne chomo ket en eur horv techet d'ar pehed.
5. Rag spered santel ar ouiziegez a deh diouz an troidellerez : pellaad a ra diouz ar mennoziou diskiant, ha pa zeu ar fallagriez ez a kuit.
6. Rag ar spered a furnez a zo hegarad, ha ne lezo ket digastiz muzellou an drougkomzer : rag Doue a wel e zigroazell, a furch beteg goueled e galon, hag a glev e deod.
7. Rag spered an Aotrou a zo er bed oll ; ha pa zalh pep tra, e oar kement a leverer.
8. Rag se neb a lavar traou fallagr, ne hell ket en em guza, hag ar varn a dle kastiza na dremeno ket e-biou dezañ.
9. Rag goulennet e vezo kont ouz an den fallagr euz e vennoziou ; hag e lavariou a yelo beteg Doue, pehini o hlevo, hag a gastizo anezañ euz e fallagriezou.
10. Rag eur skouarn oazuz a glev pep tra, ha safar ar hrozou ne vezo ket kuzet outi.
11. En em virit eta diouz ar hroz, pehini n'eo mad da netra ; pellait ar gwall-gomz euz ho teod, rag al lavar ar huzeta na'z ay ket e-biou ; hag ar genou a lavar gevier a laz an ene.
12. Na glaskit ket gand preder ar maro e faziou ho puhez, ha na brenit ket ho kollidigez gand oberiou ho taouarn.
13. Rag Doue n'en-deus ket greet ar maro, ha n'en em laouena ket euz a goll ar re veo.
14. Krouet eo pep tra gantañ evid ma chomo ; oll boblou an douar en-deus greet yah ; ha ne oa netra da vervel enno, ha ne oa ket ren an ivern war an douar.
15. Rag ar reiz a zo posteg ha peurbaduz.
16. Hogen ar re fallagr o-deus e halvet gand o oberiou ha gand o lavariou. Hag o kredi ez oa mignon dezo, int bet bevezet gantañ ; hag i o-deus greet kevredigez gantañ, o veza ma oant dellezeg da veza a-du gantañ.

II. Pennad.

1. Ar re fallagr o-deus lavaret enno o-unan e direizded o gwall mennoziou : Amzer or buhez a zo berr ha rehuz, an den goude e varo n'en-deus frealzidigez ebed, ha ne anavezer hini a ve bet distroet euz an ivernou :
2. O veza ma om ganet euz a netra, ha goude ar maro e vezim evel pa ne vem ket bet ; rag ar c'hwez a zo en on drifronn evel eur moged, hag ar ger eun elfenn a laka or halon da fiñva.
3. Pa vezo mouget houmañ, or horv ne vezo mui nemed ludu, hag ar spered a ziêzo evel eun êr skañv, hag or buhez a yelo e-biou evel eur goabrenn a dremen, hag a yelo da get evel eur vrumenn a zo bountet gand bannou an heol, ha diskaret gand an tommder anezañ.
4. Hag on ano a vezo ankounac'haet gand an amzer, ha den ebed n'en-devezo koun euz on oberiou.
5. Rag amzer or buhez n'eo nemed eur skeud a dremen, ha goude or maro n'eus mui a zistro : lakaet eo ar ziell, ha den ne zistro.
6. Deuit eta, ha piaouom ar madou a-vremañ ; hag hastom kerza krouadurien endra ma om yaouank.
7. En em leuniom gand ar gwin ar gwella, en em lardom gand eoul c'hwez-vad : ha na lezom ket flour an amzer da vond e-biou.
8. En em gurunom gand roz a-barz ma vezint goeñvet ; na vezet prad ebed e pehini na vezo tremenet or gadaliez.
9. Na vezet hini ahanom diskarg euz or gadaliez ; lezom e peb leh aroueziou a levenez ; rag ol lod eo hag on darvoud.
10. Mahom an den reiz en e baourentez, na espernom ket an intañvez, ha n'or-bezet azaouez ebed evid ar gozni hag ar bleo gwenn.
11. Bezet on nerz lezenn ar reizded : rag ar pez a zo dinerz a gaver didalvez.
12. Aozom eta spiou d'an den reiz, o veza ma eo didalvez evidom. Mar deu da enebi on oberiou, mar damall deom torridigez al lezenn, ha ma vezeka ahanom, o wall-gomza diwar-benn or buhezegez ;
13. Ema ennañ, war e veno, gouiziegez Doue, ha mab Doue en em halv.
14. Deuet eo da gelenner d'or mennoziou o-unan.
15. Ar gwel anezañ a zo kasauz deom, o veza ma eo disheñvel e vuhez diouz hini ar re all, ha ma heul heñchou all.
16. Evel louaded om sellet gantañ, pellaad a ra diouz on heñchou evel diouz eun dra saotr, gwell e kav maro ar re reiz, ha fougea a ra o lavaroud penaoz eo Doue e dad.
17. Gwelom eta hag-eñ zo gwir ar pez a lavar, arnodom ar pez a hoarvezo gantañ, hag e ouezim petra a vezo e ziwez.
18. Rag mar deo gwir vab Doue, Doue a zifenko anezañ, hag a denno anezañ euz a zaouarn e enebourien.
19. Arvestom eñ gand an dismegañs hag an enkrez, evid ma anavezim e guñvez, ha ma arnodim e habaskded.
20. Barnom eñ d'ar maro mezusa : rag hervez e lavariou e vezo sellet gand azaouez outañ.
21. Evel-se o-deus mennet, hag o-deus faziet : rag o drougiez he-deus o dallet.
22. N'o-deus ket anavezet sekrejou Doue ; n'o-deus ket gedet gobr ar re reiz ; n'o-deus ket greet a stad euz a enor an eneo santel.
23. Rag peurbaduz en-deus Doue krouet an den, ha diouz skeudenn e heñvedigez en-deus e hreet.
24. Hogen gand erez an diaoul eo deuet ar maro er bed.

25. Hag ar re a zo a-du gantañ, a ra eveltañ.

III. Pennad.

Eurvad ar re reiz, ha dizeur ar re zireiz goude ar maro.

1. Hogen eneou ar re reiz a zo e dorn Doue, hag enkreuz ar maro ne gouezo ket warnezo.

2. E doare tud varo e oant dirag daoulagad an dud direiz ; hag o dilez euz ar bed a zo bet sellet evel eur hlahar ar vrasa ;

3. Hag o rann dirazom evel eun dismantr : hogen i a zo e peoh.

4. Ha ma o-deus gouzañvet enkreuzou dirag an dud, euz ar beurbadelez eo leun o ged.

5. Bihan eo bet o glahar, ha braz e vezo o govr ; rag Doue en-deus o arnodet, hag en-deus o havet din anezañ.

6. O arnodet en-deus evel an aour er fornigell, hag evel ostiv eur sakrifis-losk en-deus o degemeret, hag en eun amzer a vezo e sello outo gand trugarez.

7. An dud reiz a lugerno, evel elfennoù a red e-touez ar raouz.

8. I a varno ar broadou, hag a aotrounio ar poblou, hag o Aotrou a reno da viken.

9. Ar re a laka o fiziañs ennañ a glevo ar wirionez ; hag ar re a zo feal en e garantez o-devezo anezañ ; rag ar ro hag ar peoh a zo evid e re zilennet.

10. Hogen ar re fallagr a vezo kastizet hervez o mennoziou ; o veza ma o-deus dilezet ar reizded, ha ma int pellaet diouz an Aotrou.

11. Neb a zistaol ar furnez hag ar helenn a zo reuzeudig ; gwan eo o ged, ha difrouez o labouriou, ha didalvez o oberiou.

12. Diskiant eo o gwraez, ha gwall-zroug o bugale.

13. Milliget eo o gouenn ; eüruz eo an hini a zo brehagn ; an hini a zo dizaotr, hag he-deus miret he gwele dinamm, he-devezo he govr, pa zello Doue ouz an eneou santel.

14. Eüruz eo ivez ar spaz pehini n'en-deus ket greet a fallagriez gand e zorn, ha n'en-deus ket bet a wall-vennoziou a-eneb Doue ; rag Doue a roio dezañ evid e fealded eun dra diouz an dibab hag eur govr ar brasa en e dempl.

15. Rag frouez al labouriou mad a zo leun a hloar, ha gwrizienn ar furnez ne zizeh morse.

16. Hogen bugale an avoultrerien n'o-devezo ket eur vuhez eüruz, ha gouenn ar gwele saotret a vezo kaset da get.

17. Hag hag o-defe eur vuhez hir, e vezint sellet evel netra, hag o hozni heh-unan a vezo heb enor.

18. Mar marvont kentoh, n'o-devezo ged ebed, hag en deiz e pehini e vezo anavezet pep tra, n'o-devezo ket a frealzidigez.

19. Rag ar ouenn fallagr he-devezo eur gwall varo.

IV. Pennad.

Maro an den reiz disheñvel diouz hini an den fallagr.

1. Peger kaer eo ar ouenn hlan hag hi skeduz ; an eñvor anezi a zo peurbaduz ; hag enoruz eo dirag Doue ha dirag an dud.
2. Skwer a gemerer diouti pa ema bezant, hag e keuzier dezi pa eo eet kuit ; trehi a ra, hag eo kurunet da viken goude beza gounezet ganti ar gobr er stourm evid ar hlanded.
3. Hogen gouenn ar re fallagr, peger paot bennag eo, a vezo didalvez, ar hreskou bastard ne roint ket a wriziou don, ha ne zeuint ket da veza stard.
4. Ha mar taolont skourrou gand an amzer, o veza n'int ket gwriennet stard, e vezint hejet gand an avel, ha gand nerz ar barr-amzer e vezint diwriennet.
5. O skourrou a vezo torret a-barz ma vezint deuet d'o hresk ; o frouez ne vezint ket mad ; pud e vezint d'ar genou, ha ne vezint mad da netra.
6. Rag ar vugale a zo ganet diwar eur gwele direiz, mar greer enklask diwar o fenn, e teuont da destou euz a fallagriez o zud.
7. Hogen an den reiz, mar deo saouzanet gand ar maro, a vezo koulskoude frealzet.
8. Rag ar pez a laka ar gozni da veza enoruz n'eo ket hirder ar vuhez, na niver ar bloaveziou ;
9. Hogen poell an den a zo dezañ evel bleo gwenn, hag eur vuhez dinamm evel eur gozni eüruz.
10. Neb en-deus plijet da Zoue a zo bet dilennet gantañ, hag e zezouget en-deus, pa veve e-touez ar beherien.
11. Skrapet eo bet gantañ gand aon na ve bet saotret e skiant gand an drougiez, ha na ve bet saouzanet e ene gand an touellerez.
12. Rag strobinnell ar vibiliz a deñvala ar mad ; ha diboeñ ar gwall-youl a ziskar ar spered dizroug.
13. Petra bennag ma en-deus bevet berr amzer, en-deus leuniet eur vuhez hir.
14. Rag e ene a oa kavet mad gand Doue ; rag se eo en em hastet d'e denna euz a-greiz ar fallagriez. Ar poblou a wel kement-se, ha ne boellont ket ; ne zeu ket en o mennoz,
15. Penaoz ema gras Doue hag e drugarez war e zent, hag e azaouez war e re zilennet.
16. Hogen an den reiz maro a damall ar re fallagr beo ; hag ar yaouankiz tremenet buan a damall buhez hir an den direiz.
17. Rag i a welo maro an den fur, ha ne boellint ket petra en-devezo mennet Doue diwar e benn, ha perag en-devezo an Aotrou e gennerzet.
18. I a welo, hag a zisprizo anezañ ; hogen an Aotrou a ray goap anezo.
19. Goude-ze e varvint heb enor, hag ez aint e-touez ar re varo en eur vezegez peurbaduz ; rag an Aotrou a vreo anezo, hag o lakay da veza mezeg ha mud ; o heja a ray beteg an diazez, ha beteg an diweza glahar e kaso anezo ; keina a raint, hag an eñvor anezo a vezo kollet.
20. Leun a spont e teuint pa o-devezo koun euz o fehejou, hag o fallagriezou a zavo da damall en o eneb.

V. Pennad.

Gounid ar re reiz. Keuz didalvez ar re zireiz.

1. Neuze ar re reiz a zavo gand eun herrder braz a-eneb ar re o-devezo aozet spiou outo, hag o-devezo lamet diouto frouez o labouriou.

2. Ar re zireiz o weloud kement-se a vezo spontet-braz, hag a vezo souezet pa welint ar re reiz salvet.

3. Hag e livrint enno o-unan, gand ar heuz, ha gand an anken a wasko war o halon : Ar re-ze eo a bere on-eus gwechall greet goap, ha pere on-eus goloet a vezegez.

4. Pegen diskiant e oam ; o buhez a zellem evel eur follentez, hag o maro evel eun dra heb enor.

5. Setu koulskoude emaint niveret e-touez bugale Doue, hag o lod a zo e-touez ar zent.

6. Faziet om eta euz a hent ar wirionez, goulou ar reiz n'en-deus ket luhet evidom, hag heol ar furnez n'eo ket bet savet warnom.

7. Skuizet om bet e hent ar fallagriez hag ar gollidigez, e heñchou diêz on-eus baleeet, ha n'on-eus ket anavezet hent an Aotrou.

8. Petra eo talvezet deom or rogentez ? Pe da betra eo bet mad deom fouge or madou ?

9. Rag tremenet eo kement-se evel eur skeud, hag evel eur reder a ya e-biou ;

10. Pe evel eul lestr a ya a-dreuz d'ar hoummou keflusket, a behini ne gaver ket al lerh, goude ma eo tremenet, na doare ebed anezañ war ar hoummou ;

11. Pe evel eun evn, a nij en êr, hag a behini ne gaver roudenn ebed ; hogen hepken trouz e ziuaskell a sko war an êr, hag a rann anezañ gand striv goude ma eo tremenet oh heja e ziuaskell, ne gaver arouez ebed euz e dremen :

12. Pe evel euz zaez a zo bet tennet etrezeg e leh ; an naer a oa bet rannet en eur framm raktal, heb na anavezer dre beleh eo tremenet.

13. Evel-se a-veh ma om ganet, ma on-eus ehanet da veza : n'on-eus gellet diskoueza arouez ebed euz on nerz, hag om bet bevezet gand on drougiez.

14. Setu petra a lavaro ar beherien en ivern.

15. Rag ged an den fallagr a zo evel ar plouz a zo savet gand an avel ; hag evel an eon skañv a zo skignet gand an arne, hag evel ar moged a zo bevezet gand an avel ; hag evel eñvor eun tremeniad ha ne chom nemed eun devez.

16. Hogen ar re reiz a vevo da viken ; e ti an Aotrou e vezo o goabr, hag ar houn anezo e ti an Uhel-meurbed.

17. Rag se e vezo roet dezo gand dorn an Aotrou eur rouantelez kaer, hag eur gurunenn skeduz : rag o golei a ray gand e zorn dehou, hag e tiwallo anezo gand e vreh santel.

18. E oaz a gemero e armou, hag eh armo e grouaduriou evid en em veñji euz e enebourien.

19. Da harnez e kemero ar reizded, ha da dok-houarn eur varn wir.

20. Kemeroud a ray an eeunder evel eun direnn didreuzuz.

21. Hogen lemma a ray e vuaneged didruez e-hiz eur goaf, hag ar bed oll a stourmo gantañ a-eneb ar re ziskiant.

22. Ar hurunou a yelo rag eeun etrezeg enno ; hag i a vezo bannet euz ar hoabr evel saeziou eur wareg stegnet-kaer, hag e kouezint war eul leh merket.

23. Buaneged Doue, ker kaled hag ar mên, a gaso kazarh outo ; ar mor a daolo outo e zour gwennaet, hag ar steriou a zihlanno gand froudenn.

24. Eun avel greñv a zavo outo, hag a skigno anezo evel eur gorventenn ; o fallagriez a gaso an douar oll da eun distro, hag o drougiez a ziskaro tron ar re halloudeg.

VI. Pennad.

Ervad ar re a heul ar furnez.

1. Gwell eo ar furnez eged an nerz ; ha gwell eo an den fur eged an den kreñv.
2. Klevit eta, roueed, ha poellit ; deskit, barnerien an douar.
3. Roit skouarn, c'hwi pere a ren ar poblou, hag a zo fouge ganeoh kaoud ar broadou dindan ho kalloud.
4. Rag ar galloud a zo bet roet deoh gand an Aotrou, hag an nerz gand an Uhel-meurbed, pehini a enklasko hoh oberiou, hag a furcho ho mennoziou.
5. O veza, pa oh ministred e rouantelez, n'hoh-eus ket barnet gand eeunder, n'hoh-eus ket miret lezenn ar reizded, ha n'hoh-eus ket baleet hervez youl Doue.
6. En eun doare spontuz hag a-barz nemeur en em ziskouezo deoh ; rag eur varn didruez a ray d'ar re a ren ar re all.
7. Rag trugarez a gav ar re zister ; hogen ar re halloudeg a vezo enkrezet gand kalz a harvder.
8. Rag Doue n'en-devezo azaouez ebed evid den ; ha ne zoujo braster hini ebed : rag ar re vihan en-deus greet kerkoulz hag ar re vraz ; hag e breder a laka en oll.
9. Hogen ar brasa enkrezo a zo miret evid ar re vrasa.
10. Evidoh eta, o ! roueed, eo ar geriou-mañ, evid ma teskot ar furnez, ha na bellaot ket diouti.
11. Rag ar re o-devezo heuliet ar reiz gand reizded, a vezo santelet ; hag ar re o-devezo desket kement-mañ, a gavo peadra d'en em zifenni.
12. Youlit eta va lavariou, karit o, hag ho-pezo ar gelennadurez.
13. Splann eo ar furnez, ha ne zeu morse da weñvi ; ar re he har, he gwel hep poan, hag ar re he hlask, he hav.
14. Diaraogi a ra ar re a hoanta anezi, hag hi en em ziskouez dezo da genta.
15. Neb a veill diouz ar mintin evid he haoud, n'en-devezo ket a boan ; he havoud a ray azezet e-tal e zor.
16. Lakaad e vennoz enni eo eta eur furnez klok ; hag an hini a veillo eviti, a vezo buan en ehan.
17. Rag hi a dro heh-unan a bep tu, evid klaskoud ar re a zellez anezi : en em ziskoueza a ra dezo gand dudi en he heñchou, hag ez a d'o diambrouga gand heh oll ragwel.
18. Rag he derou eo ar c'hoant euz ar gelennadurez.
19. Preder ar gelennadurez eo ar garantez : hag ar garantez eo sevenidigez he lezennou ; hogen sevenidigez he lezennou eo starderez ar hlanded.
20. Hag ar hlanded-se a dosta an den ouz Doue.
21. Evel-se youl ar furnez a gas d'ar rouantelez peurbaduz.
22. Ma enklaskit eta an tronou, hag ar gwalinier-roue , o ! roueed ar poblou, karit ar furnez, hag e renot da viken.
23. Karit goulou ar furnez, c'hwi oll pere a ren war ar poblou.
24. Diskoueza a rin bremañ petra eo ar furnez, ha penaoz eo deuet ; ha ne guzin ket ouzoh sekrejou Doue ; Hogen me a enklasko abaoe ma eo ganet hi ; he rei a rin da anaoud splann, ha n'ez in ket en tu all d'ar wirionez.

25. Ne gerzin ket en heveleb hent gand an hini a zo dizehet gand an erez : rag eun den en doare-ze n'en-devezo ket e lod er furnez.

26. Hogen al lod braz a dud fur eo silvidigez ar bed ; hag eur roue fur eo skoazell e bobl.

27. Kemerit eta ar gelennadurez gand va lavariou, hag e talvezo deoh.

VII. Pennad.

Gwell eo ar furnez eged an oll vadou all.

1. Va-unan on eun den marvel, heñvel ouz ar re all oll, deuet euz a ouenn an hini a oe bet greet gand douar ; va hig a zo bet doareet e kov va mamm,

2. A-hed deg miz ; hag on bet greet gand eur gwad kaouledet, ha gand gouenn ar gwaz, eh ehan ar housk.

3. Pa on bet ganet em-eus kemeret an êr boutin gand an oll, hag en heveleb douar on kouezet ; hag eur vouez leñvuz em-eus roet da glevoud evel ar re all oll.

4. En trêzennou on bet lakaet, ha gand kalz a breder on bet maget.

5. Rag n'eus roue ebed a gement a zo bet ganet en eun doare all.

6. Evid an oll n'eus nemed eun doare evid dond er vuhez, hag eun doare evid mond er-mêz.

7. Rag se em-eus c'hoantaet ar skiant, hag eo bet roet din : pedet em-eus, hag eur spered a furnez a zo deuet ennon.

8. Gwell em-eus he havet eged ar rouanteleziou hag an troniou, hag em-eus kredet penaoz ar madou ne oant netra en he heñver.

9. N'em-eus ket lakaet keit ha hi ar vein talvouduz-braz ; an oll aour en he heñver n'eo nemed eun nebeud trêz ; hag an arhant dirazi a vezo sellet evel pri.

10. Dreist ar yehed hag ar gened em-eus he haret ; hag em-eus lakaet em penn he hemeroud da houlou : rag ne deo ket evid beza mouget he sklêrder.

11. Ganti eo deuet din an oll vadou, hag eur binvidigez vraz ha divent he-deus roet din.

12. En em laouennaet on e kement-se ; o veza ma'z ee em raog ar furnez-se, petra bennag na ouien ket penaoz e oa mamm d'an oll draou-ze.

13. He desket em-eus heb distro, hag heb erez he roan da anaoud, ha ne guzan ket he finvidigez braz.

14. Rag eun teñzor divent eo evid an dud ; hag ar re o-deus bet o lod anezañ, a zo bet karet gand Doue, hag a zo deuet da veza prizet dre ar pezh o-deus bet digand ar gelennadurez.

15. Hogen David en-deus va lakaet da gomza hervez ar skiant, ha da gaoud mennoziou dellezuz euz ar pezh a zo bet roet din ; rag eñ end-eeun eo rener ar furnez, ha kelenner ar re fur :

16. Hag en e zorn emaom, ni, hag ol lavariou, hag an oll furnez, hag ar ouiziegezh, hag ar gelennadurez euz an oberiou.

17. Hag eñ e-unan eo en-deus roet din ar wir ouiziegezh euz ar pezh a zo ; evid ma teujen da anaoud reiz ar bed, ha galloudou an elfennou,

18. An derou, an diwez, hag ar hreiz euz an amzeriou, ar hemmou euz a droiou an heol, an dro hag an distro euz an amzeriou.

19. Red ar bloaveziou, ha reiz ar stered,

20. Aoz an anevaled, ha techou al loened, nerz an avelou, ha mennoziou an dud, disheñvelidigez ar gwezigou.

21. Desket em-eus kement a oa kuzet, ha ne oa ket bet c'hoaz disklêriet ; rag ar furnez heh-unan pehini he-deus krouet pep tra he deus e zesket din.

22. Rag enni ez eus eur spered fur, santel, dispar, paotuz, gwevn, helavar, eskuit, dinamm, splann, kuñv, mignon d'ar mad, lemm, na hell beza dalhet gand netra, madeg,

23. Hegarad, habask, digeflusk, diarvaruz, sioul, a hell pep tra, a wel pep tra, a zalh ennañ an oll sperejou, anad, glan, gwevn.

24. Eskuitoh eo ar furnez eged an traou ar re eskuita ; dre oll e tiz en abeg d'he glanded.

25. An êzenn a zo euz a nerz Doue, hag an diskarg glan euz a sklêrder an Ollhalloudeg : rag se ne gaver enni netra a zihlan.

26. O veza ma eo ar sked euz ar goulou peurbaduz, ar melezour dinamm euz a veurdez Doue, ha skeudenn e vadelez.

27. Hag o veza ma eo unan hepken, e hell pep tra : hag o chom enni e-unan e teu da nevezi pep tra, hag e-touez ar broadou en em skign en eneoù santel, hag e toare mignoned Doue hag ar brofeded.

28. Rag doue ne gar nemed an hini a chom gand ar furnez.

29. Kaerroh eo hi eged an heol, hag uheloh eged an oll stered ; ma he lakaer tost d'ar goulou, e vezo kavet dreistañ ;

30. Rag an noz a zeu goude an deiz ; hogen an drougiez ne hell ket trehi ar furnez.

VIII. Pennad.

C'hwekder ar furnez.

1. Ar furnez a diz gand nerz euz a eur penn d'ar penn all ; gand kuñvelez eh aoz pep tra.

2. He haret em-eus, he hlasket em-eus aba ma oan yaouank : poelladet em-eus he haoud da wreg, hag em-eus enklasket he haerded.

3. Diskoueza a ra gloar he fennabeg, o veza ma eo unvanet striz gand Doue : ha ma eo karet gand an hini a zo an Aotrou euz a bep tra.

4. Hi eo a zesk kelennadurez Doue, hag a reiz e oberiou.

5. Ma c'hoantaer madou ar vuhez, petra a zo pinvidikoh eged ar furnez, pehini a ra pep tra ?

6. Mar gra eun dra spered an den, piou en-deus muioh a lod en ober-ze egeti ?

7. Mar kar eur re ar reiz ; hi eo c'hoaz a ro an dellidou braz : hi eo a zesk an dalh, ar poell, ar reiz, hag an nerz, pere eo an traou talvoudusa d'an den er bed-mañ.

8. Ma c'hoanta eur re donder ar ouiziegezh ; hi a oar ar pezh a zo tremenet, hag a oar ar pezh a zo da zond ; hi a oar troidellou al lavariou, ha displegou ar parabolennoù : hi a oar an arouezioù hag ar burzudou a-barz ma c'hoarvezont, hag ivez darvoudou an amzerioù hag ar hantvedou.

9. Lakaet em-eus eta em penn he hemeroud da eil em buhez ; pa ouzon penaoz e roy lod din euz he madou, hag e vezo va frealzidigez em poaniou hag em doaniou.

10. Ganti em-bezo brud-vad e-touez ar poblou, hag enor e-touez ar re goz, petra bennag ma on yaouank.

11. Lemm e vezo kavet va spered er varn ; souezuz e vezin kavet dirag ar re halloudeg, hag ar briñsed a ziskouezo o estlamm war o dremm.

12. Pa davin e hortozint ma komzin ; pa gomzin e sellint piz ouzin ; ha pa brezegin, e lakaint o dorn war o genou.

13. Ganti eo em-bezo ar beurbadelez, hag e lezin eun ano peurbaduz d'a re a zeuy va goude.

14. Ar poblou a renin : hag ar broadou a vezo dindan va galloud.

15. Ar roueed ar re greñva a vezo spontet, pa glevint komza diwar va fenn ; me a ziskouezo penaoz on mad e-keñver va fobl, ha galloudeg er brezel.

16. Pa'z in em zi, eh ehanin ganti : rag he frezegenn n'eo ket c'hwero, na doaniuz he darempred ; hogen laouenidigez ha dudi int.

17. Hogen o venna kement-se, oh e boelladi em halon, o veza ma ema ar beurbadelez kevred gand ar furnez,

18. Eun dudi braz en he harantez, pinvidigeziou diniver e oberiou he daouarn, ar poell e stourmou he lavariou, hag eur hloar vraz e roidigez he lavariou ; em-eus he hlasket tro-war-dro, evid he hemeroud evidon.

19. Hogen eur bugel gwevn e oan, hag eun ene mad em-boa bet.

20. Hag o tond da veza mad muioh-mui, on deuet en eur horv dizaotr.

21. Hag o veza ma ouien penaoz ne hellen ket kaoud an dalh, nemed e ve bet roet din gand Doue ; hag ar furnez e oa gouzoud a behini e teue ar ro 'zo, e komzis ouz an Aotrou, e pedis anezañ, hag e liviris dezañ a-greiz va halon.

IX. Pennad.

Pedenn evid goulenni ar furnez.

1 . Doue va zadou, Aotrou a drugarez, te pehini eh-eus greet pep tra gand da her,

2. Te pehini en-deus doareet an den gand da furnez, evid ma en-divije an aotrouniez war ar grouadurien eh-eus greet.

3. Evid ma renje ar bed gand eeunder ha gand reizded, ha ma tougje e varnou en eeunder da galon ;

4. Ro din ar furnez a zo azezet ganez war da dron, ha n'am distaol ket euz a douez da vugale ;

5. Rag da zervijer on, ha mab da vatez, eun den gwan, a vuhez verr, ha dihalloudeg e-keñver ar furnez euz ar varn hag euz al lezennou.

6. Rag pa ve eur re gouizieg-braz e-touez an dud, ma n'ema ket da furnez ennañ, evel netra e vezo sellet.

7. Va dilennet eh-eus da roue d'az pobl, ha da varner d'az mibien ha d'az merhed.

8. Lavaret eh-eus din sevel eun templ war da venez santel, hag eun aoter er gêr e pehini e chomez, heñvel ouz da dabernakl santel, eh-eus aozet adaleg ar penn kenta :

9. Ha da furnez pehini a zo ganez, eo an hini a anavez da oberiou, an hini a oa eno dirazout pa eh-eus greet ar bed, hag a oar petra a zo mad dirag da zaoulagad, ha petra eo eeunder da gemennou.

10. Kas hi euz an neñvou da zantuar, hag euz a dron da veurded, evid ma vezo ha ma labouro ganen, ha ma ouezin petra a zo kavet mad ganez.

11. Rag hi a oar hag a boell pep tra ; va has a ray em oberiou gand evez mad, hag e tiwallo ahanon gand he galloud.

12. Ha va oberiou a vezo hetuz dit ; hag e renin va fobl gand reiz, hag e vezin din euz a dron va zad.

13. Rag piou eo an den a hellfe anaoud mennoz Doue ? Pe piou a hellfe gouzoud petra a fell da Zoue ?

14. Rag mennoziou an dud a zo abaf, hag or hent-gwelou a zo arvaruz.

15. Rag ar horv pehini en em zaotr a bounnera an ene, hag an ti-douar-ze a wask war ar spered en niver braz a brederiou.

16. Diêz eo deom gouzoud ar pezh a zo war an douar ; hag a-veh eo mar gwelom ar pezh a zo dirazom. Hogen piou a hello gweloud ar pezh a zo en neñvou ?

17. Hogen piou a anavezo da vennoz, ma ne roez da-unan ar furnez, ha ma na gasez da spered santel euz an uhella euz an neñvou ;

18. Evid ma eeuno raventchou ar re a zo war an douar, ha ma tesko an dud petra a zo hetuz dit ?

20. Rag dre ar furnez eo eo bet yac'haet ar re oll pere o-deus plijet dit adaleg ar penn kenta.

X. Pennad.

Burzudou greet gand ar furnez adaleg ar penn kenta.

1. Hi eo he-deus miret an hini en-doa doareet Doue da genta, evid beza da dad d'ar bed, pa ne oa krouet nemetañ.

2. Hag hi eo a dennas anezañ euz e behed, hag a roas dezañ an nerz da rena pep tra.

3. Pa en em rannas diouti an den direiz en e vuaneged, e reas eur gwall ziwez o laza e vreur.

4. Ha pa zeuas an dour da veuzi an douar en abeg dezañ, ar furnez e zaveteas a-nevez, o rena an den reiz gand e wad displed.

5. Ha pa zispahas kevred ar broadou evid en em rei d'an droug, hi eo a anavezaz an den reiz, hag a viras anezañ dinamm dirag Doue, hag a roas dezañ an nerz da drehi e garantez evid e vab.

6. Hi eo a zieubaz an den reiz pa dehe euz a-douez ar re fallagr, pere a oe dispennet gand an tan a gouezas war ar pemp kêr.

7. Hag en eñvor euz o fallagriez e tivoged c'hoaz an douar-ze a zo chomet didud, e toug ar gwez frouez ha na zarevont ket, hag e peleh e weler eur skeudenn holen a zo da eñvor euz a eun ene diskredig.

8. Rag ar re o-deus dilezet ar furnez, a zo kouezet e diouiziegez ar mad, hag o-deus lezet d'an dud an eñvor euz o follentez, heb ma hell beza bet kuzet o fehejou.

9. Hogen ar furnez he-deus tennet euz o foaniou ar re o-deus he miret.

10. Hi eo he-deus kaset dre heñchou eeun an den reiz pa dehe diouz buaneged e vreur, hag he-deus diskouezet dezañ rouantelez Doue, hag he-deus roet dezañ gouiziegez ar zent ; e binvidikaet he-deus en e labouriou, hag he-deus roet dezañ ar frouez anezo.

11. E skoazellet he-deus a-eneb ar re a felle dezo e douella, hag he-deus e binvidikaet.

12. E viret he-deus diouz e enebourien, e ziwallet he-deus diouz e douellerien, hag he lakaet he-deus da drehi en eur stourm kreñv, evid ma ouezfe penaoz ar furnez a zo galloudusoh eged pep tra.

13. Hi eo pehini n'he-deus ket dilezet an den reiz pa eo bet gwerzet, hag he-deus e dennet euz a zaouarn ar beherien : diskennet eo bet ganti er poull,

14. Ha n'he-deus ket e zilezet er chadennou, ken n'he-deus roet dezañ ar walenn roue, hag ar galloud a-eneb ar re o-doa e wall-gaset ; da haouiaded he-deus lakaet ar re o-doa e wallet, hag he-deus roet dezañ eun ano peurbaduz :

15. Hi eo he-deus dieubet ar bobl reiz, ar ouenn didamall, euz ar vroad a wall-gase anezi.

16. Mond a reas e ene eur servijer Doue, hag e savas gand aroueziou ha burzudou a-eneb ar roueed doujuz-braz.

17. Roet he-deus d'ar re reiz gobr o labouriou, hag o haset he-deus en eun hent estlammuz : bet eo dezo evel eur ouel e-pad an deiz, hag evel goulou ar stered e-pad an noz.

18. O haset he-deus d'ar mor Ruz, hag o lakaet he-deus da dreuzi kalz doureier.

19. O enebourien he-deus beuzet er mor, ha maro he-deus o zennet euz ar goueled. Evel-se ar re reiz o-deus degaset dibourhou ar re fallagr.

20. Hag i o-deus kanet, Aotrou, da ano santel, hag o-deus meulet kevred da zorn gounideg.

21. Rag ar furnez he-deus digoret genou ar re vud, hag he-deus lakaet da veza helavar genou ar vugaligou.

XI. Pennad.

Ar furnez he-deus kaset an Izraelited a-dreuz d'an distro.

1. O haset he-deus en o oberiou gand eur profed santel.

2. Kerzet o-deus a-dreuz lehiou distro, hag a oa didud : hag e lehiou distro o-deus stegnet o zeltou.

3. Ouz o enebourien int bet savet, ha treh int bet dezo.

4. Sehed o-deus bet, hag o-deus da bedet ; ha te eh-eus roet dezo euz a eur roh uhel, hag o zehed a zo bet torret gand eur mên kaled.

5. Rag evel ma oa kastizet o enebourien, pa ne gavent ket a zour, en heveleb amzer ma en em laouennae bugale Izrael o veza ma o-doa o gwalh a zour,

6. Eñ a reas vad d'e dud neuze, o rei dezo dour, pa o-doa ezomm.

7. Evel-se e-leh doureier eur ster hag a rede bepred, eh-eus roet gwad den da eva d'ar re zireiz.

8. Hag e leh ma varve ar re-mañ en abeg d'ar vugale o-doa lazet, eh-eus roet d'az tud dour a-walh pa n'e hedent ket.

9. O tiskoueza dre ar zehed a hoarvezas neuze, penaoz e savez da dud, hag e lakaez da vervel o enebourien.

10. Rag goude ma eo bet arnodet da re, hogen gand eur hastiz leun a drugarez, o-deus anavezet penaoz eh enkrezez ar re fallagr, oh o barna dre da froudenn.

11. Ar re-mañ eh-eus arnodet evel eun tad pehini a gelenn, ar re-ze eh-eus kastizet evel eur roue a varn gand garventez.

12. Rag pe e oant ganto, pe ne oant ket, int bet enkrezet.

13. Diou zoan ha daou geinvan o-doa, pa zeue da goun dezo ar pez a oa tremenet.

14. Pa glevjont penaoz ar pez en-doa o enkrezet a oa deuet da vad evid ar re all, eh anavezjont an Aotrou, souezet ma oant gand degouez an traou.

15. En diwez e selljont gand souez ouz an hini a behini o-doa greet goap, en abeg d'ar gwall zilez a oa bet greet anezañ pa weljont penaoz e oa disheñvel o zehed diouz hini ar re reiz.

16. Hag o veza ma eo bet fellet dit kastiza ar mennoziou diskiant euz a fallagriez ar poblou-ze, ha dirollou lod anezo pere a azeule naered mud, ha loened displet, eh-eus kaset dezo evid en em veñji, eul lod braz a loened mud :

17. Evid ma ouezjent penaoz pep hini a zo enkrezet gand ar pez gand pehini en-deus pehet.

18. Rag ne oa ket diêz d'az torn galloudeg, pehini en-deus krouet ar bed gand eun danvez dizoare, kas outo eul lod braz a oursed, pe a loened fero,

19. Pe loened euz a eur ouenn nevez ha dianav, leun a froudenn, pere a daolje flammou euz o difronn, pe a fennje eur moged du, pe a strinkje euz o daoulagad elfennou tan hag i euzuz ;

20. Pere o-divije gellet o laza gand o dent, pe o lakaad da vervel gand ar spont ouz o gweloud.

21. Hep se zoken e hellent beza lazet gand eur hwezadenn, gand an heskin euz o gwallou o-unan, ha diskaret gand ar c'hwez euz da halloud : hogen te a reiz pep tra gand ment, gand niver, ha gand pouez.

22. Hag ar veli vraz a zo dit da-unan, hag a chom bepred ganez : ha piou a hello enebi ouz da vreh ?

23. Ar bed oll a zo dirazout evel eur pouez bihan a lakaer er valañs, hag evel eur banne gliz a gouez war an douar diouz ar mintin.

24. Hogen truez eh-eus ouz an dud oll, o veza ma hellez pep tra, hag e holoez o fehejou evid ma raint pinijenn.

25. Rag te a gar kement a zo, ha ne gasaez netra euz a gement eh-eus greet ; rag ma ez-pije e gasaet, n'az-pije ket e hreet.

26. Petra a hellfe padoud, ma ne fellfe ket dit ? Pe a hellfe en em viroud heb da urz ?

27. Habask out e-keñver an oll o veza ma eo pep tra dit, o ! Aotrou, pehini a gar an eneou.

XII. Pennad.

Madelez hag habaskded Doue.

1. O ! Aotrou, peger mad eo da spered, ha peger kuñv eo e pep tra !

2. Rag se eo e kastizez nebeud a nebeud ar re a fazi ; hag e kelennez hag e kenteliez ar re o-deus pehet ; evid ma tilezint an droug, ha ma kredint ennout, Aotrou.

3. Te a argarze ar re a chome kent en da zouar santel,

4. O veza ma reent oberiou kasauz gand strobinnellou ha gand sakrifisou fallagr,

5. Ma lazent heb truez o bugale o-unan, ma tebrent bouzellou an dud, ma lonkfent ar gwad a-eneb d'az kourhemenn santel ;

6. Ha ma'z oant kevred an tadou hag al lazerien-vab euz an eneoù dilezet : hag eo bet fellet dit o holl dre zaouarn on tadou,

7. Evid ma teuje an douar-ze, pehini eo ar muia karet ganez, da veza da zegouez dellezuz da vugale Doue.

8. Hogen o espernet eh-eus evel tud ma'z oant, hag eh-eus kaset gwesped evel ar rederien e-raog da arme, evid ma o dispennjent a nebeud e nebeud.

9. N'eo ket n'az-pije gellet lakaad da bleaga gand ar brezel ar re fallagr dindan ar re reiz, pe o dispenna gand al loened fero, pe gand eur ger garo ahanout :

10. Hogen oh o barna a zeiz e deiz, e roes leh dezo da ober pinijenn, petra bennag ma ouies penaoz e oa eur gwall vroad, ha ma oa o drougiez en o aoz, ha ne zistroje biken o gwall vennoz :

11. Hag o gouenn a oa milliget abaoe ar penn kenta : hag oh o esperoud evel-se en o fehejou, n'ez-poa ano rag den ebed.

12. Rag piou a lavaro dit : Perag eh-eus-te greet evel-se ? Pe piou a zavo a-eneb da varn ? Pe piou en em ziskouezo dirazout evid difenni an dud fallagr ? Pe piou a damallo ahanout mar dispennet ar broadou ez-poa krouet ?

13. Rag goude te, pehini a lakaez da breder en oll dud, n'eus Doue all ebed dirag pehini e tlefes diskoueza penaoz n'eus netra a zireiz er barnou a zougez.

14. N'eus na roue na priñs a gement a hellfe enklaskoud perag e tispennet eur re.

15. O veza eta ma out reiz, e renez pep tra gand reizded ; hag e sellez evel eun dra er-mêz euz da halloud, tamalloud eur re pehini na zellez ket beza kastizet.

16. Rag da halloud eo ar pennabeg euz ar reizded ; hag o veza ma out Aotrou an oll, out damantuz e-keñver an oll.

17. Da halloud a ziskouezez, pa ne greder ket ez-pe eur halloudegez vraz, hag e vezekaez herrder ar re pere na anavezont ket ahanout.

18. Hogen o veza ma out an Aotrou galloudeg, e varnez gand habaskded, hag e renez ahanom gand kalz a azaouez : rag pa giri e helli diskoueza da halloud.

19. Oh ober evel-se eh-eus desket d'az pobl penaoz eo red beza reiz hag hegarad ; hag eur ged mad eh-eus roet d'az pugale : pe eo gwir penaoz oh o barna, e roez leh dezo da ober pinijenn goude o fehejou.

20. Rag pa eh-eus kastizet enebourien da zervijerien hag ar re o-deus dellezet ar maro, pa eh-eus greet kement a azaouez, o rei dezo an amzer hag al leh da helloud distrei euz o drougiez ;

21. Gand peger braz evez eh-eus-te barnet da vibien, da dadou pere ez-poa roet da her gand le, o rei da heda dezo madou ker braz ?

22. Pa roez eta kelenn deom, eh enkrezez on enebourien e meur a zoare, evid ma likiim evez ouz da vadelez en da varnou, ha ma hedim da drugarez, pa deui d'or barna.

23. Dre ze d'ar re o-doa bevet en diboell hag en direiz, eh-eus roet enkrezez braz gand ar pezh o-doa azeulet.

24. Rag pell amzer o-doa kerzet e hent ar fazi, o selloud evel doueed al loened ar re zispleta, hag o veva evel bugale diskiant.

25. Rag se eh-eus greet goap anezo, oh o hastiza evel bugale diskiant.

26. Hogen ar re pere n'int ket bet kastizet a-walh gand an dael ha gand ar hroz, o-deus gouzañvet eur varn din euz a eun Doue.

27. Rag doaniet o weloud penaoz e oant enkrezet gand an traou a zellent evel doueed, ha penaoz e oant dispennet ganto, eh anavezjont ar gwir Zoue, peogwir ne felle ket dezo da anaoud kent ; hogen gand an diweza varn e oent mahet.

XIII.Pennad.

Dallentez ar re o-deus roet an ano a Zoue da labour daouarn an dud.

1. Avel n'eo ken an dud pere na anavezont ket Doue, ha n'o-deus ket gellet poella, gand ar madou a weler, an hini a zo, ha n'o-deus ket anavezet ar Hrouer, o selloud ouz e oberiou.

2. Hogen i o-deus kredet penaoz an tan, pe an avel, pe an êr skañv, pe strollad ar stered, pe lonk an doureier, pe an heol hag al loar, a oa an doueed a rene ar bed oll.

3. Ma o-deus kredet penaoz e oa ar re-mañ doueed, o veza ma oant kaer ; gouezent pegement eo kaerroh c'hoaz an hini a zo o Aotrou ; rag krouer an oll gaerded eo en-deus greet kement-se oll.

4. Ma int bet souezet gand galloud hag oberiou ar re-mañ ; ra boellint ahano penaoz eo c'hoaz kreñvoh an hini en-deus o greet.

5. Hag ar braster hag ar haerder euz ar hrouadur a ro da anaoud ha da weloud ar hrouer anezo ;

6. Hogen n'eo ket c'hoaz ken tamalluz ar re-mañ ; rag mar deuont da fazia, eo marteze o klask Doue, ha gand ar c'hoant d'e gavoud.

7. E glask a reont o veva e-kreiz o oberiou ; ha saouzanet int gand ar gaerded euz an traou a welont.

8. Hogen a-hend-all ne zellezont ket a drugarez.

9. Rag ma o-deus bet gouiziegez a-walh evid anaoud reiz ar bed, penaoz n'o-deus-i ket kavet êsoh c'hoaz an hini a zo da Aotrou warnezañ !

10. Hogen reuzeudig eo, ha dihed nemed e-touez ar re varo, ar re pere a ro an ano a zoueed da oberiou dorn an dud, d'an aour ha d'an arhant, da ijinou ar skiant, da skeudennou al loened, ha da eur mên didalvez, labour eun dorn an amzer goz.

11. Eul labourer gwevn a droh en eur hoad eur wezenn eeun ; he diruska a ra gand ijin, hag o laboura diouz e skiant, e ra ganti eun annez evid ezommou ar vuhez.

12. Gand ar pez a zo chomet goude e labour, e ra tan evid aoza e voued :

13. Hag o weloud penaoz an dilerh euz ar wezenn n'eo mad da netra, o veza ma eo eur hoad kromm, ha leun a skodou, e kizell anezañ gand preder en e amzer gollet, hag e ro eun doare dezañ gand e ouiziegez, hag hel laka da veza heñvel ouz eun den,

14. Pa out eul loen bennag ; hag o liva anezañ gand liou tane, hel laka da veza ruz ; hag e kuz gand al liou an oll nammou anezañ.

15. Ober a ra evitañ eul lojel gaer ; e lakaad a ra er voger, hag e starta anezañ gand houarn ;

16. Gand aon na gouezje. Evez a laka, o veza ma oar penaoz ne hell ket en em skoazella e-unan ; rag eur skeudenn n'eo ken, hag euz a eur skoazell en-deus ezomm.

17. Gouestlou a ra dezañ, hag e ped anezañ evid e vadou, evid e vugale, evid eun dimezi. N'en-deus ket a vez o komza ouz eun dra diene ;

18. Evid e yehed e ped an hini a zo simpl ; ar vuhez a houlen digand eun dra varo : hag e halv da skoazell an hini na hell ket en em skoazella e-unan.

19. Evid gelloud kerzoud, e ped an hini ha na hell ket balea. Ha pa fell dezañ prena pe ober eun dra, pe dond a-benn euz a eun dra, e ped an hini hag a zo didalvez e pep tra.

XIV. Pennad.

Penaoz eo deuet an idolatri.

1. Eun all ivez o felloud dezañ⁴⁰³ mond war vor, en em laka en hent war ar hoummou keflusket, hag a bed eun tamm koad breskoh eged ar hoad a zoug anezañ.

2. Rag ar c'hoant gounid eo en-deus mennet e zoarea, hag ar micherour en-deus e labouret gand e wenvded.

3. Hogen da raggweled, o ! Tad, pehini a ren anezañ : rag te eo eh-eus digoret eun hent a-dreuz ar mor, hag eur ravent kaled e-kreiz ar hoummou.

4. Evid diskoueza penaoz e hellez tenna euz a beb gwall, ha pa en em roje eur re war ar mor heb ijin ebed.

5. Hogen evid na vezo ket didalvez oberiou da furnez, n'o-deus ket a aon an dud da fizioud o buhez en eur hoad dister, hag o treuzi ar mor, en em zieubont gand eul lestr.

6. Evel-se adaleg ar penn kenta pa oe dispennet ganez al langouineien, eul lestr a oe ar ged euz ar bed oll, ha renet gand da zorn, e viras evid ar bed ar ouenn euz a behini e tlee beza ganet a-nevez.

7. Rag ar hoad dre behini eo bet greet ar reizded, a zo eur hoad benniget.

8. Hogen ar hoad gand pehini e reer an idol, a zo milliget e-unan, kerkoulz hag an hini en-deus e hreet ; hemañ o veza ma en-deus greet eun idol, hag hennez o veza ma eo eur hoad bresk, ha ma toug an ano a zoue.

9. Rag Doue a gasa en eun doare kevatal ar fallagr hag e fallagriez.

10. Rag al labour greet a houzañvo an heveleb poan, hag an hini en-devezo e hreet.

11. Rag se idolou ar broadou ne vezint ket espernet, o veza ma eo deuet krouadurien Doue da veza argaruz, ha da abeg a douellerez evid an dud, ha da lindag evid treid ar re ziskiant.

12. Rag arnod an idolou eo bet penn kenta ar fallagriez, hag an diazez anezo saotr ar vuhez.

13. N'int ket bet adaleg ar penn kenta, ha ne vezint ket da viken.

14. Avel an dud eo en-deus o degaset er bed : ha dre ze e teuio an diwez anezo a-barz nemeur.

15. Eun tad glaharet euz a varo taer e vab, a lakaas da ober skeudenn an hini a oa bet skrapet digantañ ker buan, hag e teraouas azeuli evel eun doue an hini a oa

⁴⁰³ o felloud dezañ : Implijoud a ra Gonideg aliez-kenañ ar stumm "o + verb", ar pezh a zo eur fazi braz, bet greet abaoe pell 'zo, hag a vez greet aliez bremañ. Red e vefe bet skriva "pa fell dezañ".

maro evel eun den a-nevez e oa ; hag e savas evitañ eur gehelidigez ha sakrifisou e-touez e zervijerien.

16. Goude-ze gand an amzer, ar gwall voaz-se a startaas, ar fazi a oe miret evel eul lezenn, hag ar skeudennou a oe azeulet gand gourhemenn ar roueed.

17. An dud ivez pa ne hellent ket adori ar re a oa re bell, a lakaas da zegas a bell an daolenn anezo ; hag e tiskouezjont skeudenn ar roue a felle dezo da enori, evid kehela gand preder, hag evel bezañs an hini a oa pell.

18. Gwenvded vraz ar gizellerien a greskas c'hoaz kalz ar geheledigez-se e spered ar re ziskiant.

19. Pep hini anezo evid plijoud d'an hini a brederie anezañ, a labouras gwella ma hellas evid ober eur skeudenn glok.

20. Hag eul lod braz a dud saouzanet gand ar gaerded euz al labour, a zellas evel eun doue an hini o-doa enoret nebeud a oa evel eun den.

21. Ahano eo deuet mezevellidigez buhez an den, pehini pe dre garantez, pe evid plijoud d'ar roueed, o-deus roet da vein pe da goad eun ano ha na oa ket dleet dezo.

22. Ha n'eo ket bet a-walh dezo beza bet faziet e-keñver an anaoudegez euz a Zoue, hogen en eur veva en eun diroll braz en abeg d'o diouiziegez, e roont an ano a beoh da zrougou ker braz ha ker paot.

23. Rag pe e lazont o bugale o-unan, pe e reont e kuz gwall zakrifisou, pe e lidont nozveziou leun a vezegez.

24. Ne viront reiz ebed nag en o buhezegez, nag en o dimeziou ; hogen an eil a laz egile dre erez, pe a vezeka anezañ gand an avoultriez.

25. Ha kemmesket eo pep tra, ar gwad, al lazerez, al laeroñsi, an touellerez, ar saotr, an displealded, ar reustl, ar gwall-ze, strafuill an dud reiz.

26. An ankounah euz a Zoue, dihlanded an eneou, an diforhidigez, distarded an dimeziou, direizded an avoultriez hag ar hadaliez ;

27. Rag kehelidigez an idolou eo an abeg, ar penn kenta hag ar penn diweza euz an oll zroug.

28. Pe e pennsaoudont en o ebatou, pe e tiouganont e gaou, pe e vevont en eun doare direiz, pe e touont e gaou.

29. Rag pa lakaont o fiziañs en idolou, pere n'o-deus ket a ene, n'o-deus ket a aon da veza kastizet en abeg d'o gwall-leou.

30. Hogen a bep tu e teuy ar hastiz dezo, o veza ma o-deus bet gwall vennoziou e-keñver Doue, o kehela an idolou, ha ma o-deus greet gwall-leou, o tisprizoud ar reizded.

31. Rag n'eo ket galloud ar re dre bere eo bet touet, hogen ar reizded a heskin ar beherien a gastiz bepred displealded an dud direiz.

XV. Pennad.

Dallentez ar re a ra idolou.

1. Hogen te, on Doue, a zo kuñv ha gwirion, hag habask ; hag e renez pep tra gand trugarez.

2. Ha pa or-be pehet, om dit, pa anavezom da veurded : ha ma n'on-eus ket pehet, eh ouzom penaoz om bet niveret e-touez da re.

3. Rag da anaoud eo ar reizded klok : ha gouzoud da reizded ha da halloud, eo gwrienn ar beurbadelez.

4. Hogen ni n'om ket bet touellet gand gwall oberiou ijin an dud, na gand labour difrouez al livadurez, na gand ar skeudennou marellet,

5. Pere a laka gwall youl en eun den diskiant, hag hel laka da garoud skeud eun dra diene.

6. Ar re a gar an droug a hell lakaad o ged en heveleb doueed, kerkoulz ar re o gra, hag ar re o har, hag ar re o azeul.

7. Eur poder pehini a ver ar pri gwag, a ra gand e labour an oll listri a zo mad evidom ; gand an heveleb pri e ra al listri a zo mad evid an traou deread, hag ar re n'int mad nemed evid an traou dizeread ; hag ar poder eo a venn da betra e vezo mad an eil hag egile anezo.

8. Ha goude-ze gand eul labour didalvez e ra eun doue gand an heveleb pri, eñ pehini, n'eus ket pell, a zo bet greet gand douar, ha pehini a-barz nemeur a dle distrei en douar a behini eo bet tennet, pa vezo goulennet digantañ an ene a oa bet roet dezañ evid eun amzer.

9. Hogen ne laka ket e breder er boan en-devezo, nag e berrder e vuhez ; trehi a fell dezañ ar re a labour en aour hag en arhant ; heulia a ra ar re a labour en arem, hag e laka e hloar oh ober traou didalvez.

10. Rag ludu eo e galon, douar dister e hed, ha displetoh eged fank e vuhez.

11. O veza ne anavez ket eñ an hini en-deus e hreet, an hini en-deus lakaet da zevel ennañ an ene hel laka da laboura, an hini en-deus c'hwezet ennañ ar spered a vuhez.

12. Lod o-deus kredet penaoz or buhez n'eo nemed eur c'hoari ; ha lod all penaoz n'eo nemed eur werzidigez evid ober gounidou, ha penaoz eo red dastumi madou a bep hent mad pe fall.

13. Hogen hennez a oar penaoz eo gwasoh eged ar re all oll, eñ pehini a ra gand an heveleb douar listri bresk hag idolou kizellet.

14. Hogen enebourien da bobl, hag ar re a faez anezi, a zo rog, reuzeudig ha diskiant dreist-oll,

15. O veza ma sellont evel doueed oll idolou ar broadou, pere ne welont ket gand o daoulagad, ne hwezont ket gand o difronn, ne glevont ket gand o dioukouarn, ne veront ket gand bizied o daouarn, ha ne valeont ket gand o zreid.

16. Rag eun den eo en-deus o greet ; hag an hini e pehini eo bet lakaet ar spered a vuhez, eo en-deus o doareet . Den ebed ne hell ober eun doue heñvel outañ e-unan.

17. O veza ma'z eo dalhet d'ar maro, ne ra gand e zaouarn fallagr nemed eun dra varo. Evel-se eo gwelloc'h eñ eged ar re a azeul ; rag eñ a vev, petra bennag ma tle mervel, hogen i morse, na biken.

18. Ar re zisterra euz al loened a azeulont, pere o veza hevelebekaet ouz ar re ziboell anezo, a zo disterroh egeto.

19. Rag lod euz al loened-se a zo argaruz da weloud : ha tehet o-deus diouz meuleudigez ha bennoz Doue.

XVI. Pennad.

Doue a gastiz an Ejiptianed, hag a vennig an Hebreed.

1. Rag se int bet heskinet gand an heveleb loened-se evel ma tellezent, ha gand eul lod braz anezo int bet dispennet.

2. E-leh an enkrezoze, eh-eus greet vad d'az pobl o rei dezi ar boued c'hwek he-doa c'hoantaet, oh aoza dezañ koailled evel eur hig blazet mad.

3. Ar re-ze gand an hast o-doa da zebri, a heuge zoken ar bouedou a oa red dezo, en abeg d'ar gouliou en-doa kaset Doue dezo ; hogen ar re-mañ pere ne oant ket bet pell en ezomm, a gavas mad ar boued nevez-se.

4. Rag bez' e oa red e kouezje eun dismantr didehuz war ar re o-doa greet heskin, ha diskoueza hepken d'ar re all penaoz e tismantrez o enebourien.

5. Evid gwir eo bet taget ar re-mañ gand loened fero ; lazet int bet gand ar hrog euz a wall naered :

6. Hogen da vuanegez ne badas ket da viken : evid eur berr amzer e oent enkrezet gand ar hastiz-se, a oe da arouez a zilvidigez dezo, ha da eñvor euz a hourhemenn da lezenn.

7. Rag an hini a droe ouz an naer-ze, ne oa ket yac'haet gand ar pez a wele, hogen ganez, Salver an oll :

8. Ha dre ze eh-eus diskouezet d'on enebourien, penaoz eo te a denn a beb droug.

9. Rag i a zo bet lazet gand krog ar hilleien-raden hag ar helien, ha n'o-deus ket kavet a louzou evid o yac'haad, rag dellezet o-doa beza dispennet en doare-ze.

10. Hogen da vugale n'int ket bet trehet gand dent kontammuz an naered ; rag da drugarez a zo deuet, hag he-deus o yac'haet.

11. E koun euz da lavariou e oant flemmet, ha raktal e oant yac'haet, gand aon na gouezjent en eun ankounah braz euz da lezenn, ha na helljent mui dellezoud da skoazell.

12. Rag ne oa ket eul louzaouenn, n'eo ket eur palastr en-deus o yac'haet, hogen da her, o ! Aotrou, pehini a yac'ha pep tra.

13. Rag te eo, Aotrou, eh-eus ar galloud euz ar vuhez hag euz ar maro, hag a gas beteg doriou ar maro, hag a zegas ahano.

14. Eun den a hell laza eun all dre zrougiez ; hogen pa vezo eet ar spered er-mêz, n'hell laka ket da zistrei, ha ne azgalvo ket an ene pa vezo eet kuit :

15. Hogen te, Aotrou, ne heller ket tehoud diouz da zorn.

16. Rag se ar re fallagr pa o-deus da zinahet, a zo bet skourjezet gand nerz da vreh : heskinet int bet gand glaveier dibaot, gand kazarhiou ha gand arneou ; ha gand an tan int bet bevezet.

17. Hag ar pez a zo ar souezusa, an tan a zeve c'hoaz muioh en dour, pehini a voug pep tra ; rag ar bed oll a veñj ar re reiz.

18. Habaskaad a ree a-wechou an tan, evid na zevje ket al loened a oa bet kaset a-eneb ar re fallagr : evid pa weljent kement-se, e teujent da houzoud penaoz eo dre varn Doue e houzañvent ar hastiz-se.

19. Hag a-wechou an tan a greske e nerz en dour, hag a zeve a bep tu, evid kas da get kement a oa bet savet en douar direiz-se.

20. El leh-se eh-eus maget da bobl gand boued an êled : kaset eh-eus dezo euz an neñv eur bara aozet heb labour ebed, pehini en-doa ennañ pep c'hwekder, pe peb blaz mad.

21. Rag danvez ar boued-se dit a ziskoueze peger braz eo da vadelez e-keñver da vugale ; pa eo gwir penaoz diouz c'hoant pep hini, e troe er pez a gare ar muia.

22. An erh hag ar skorn a vire, heb teuzi nerz an tan ; evid ma teuje da houzoud da enebourien penaoz endra ma teue an tan da zevi e-kreiz ar harzarh hag ar glao, ha da nevezi o oll frouez,

23. Eh ankounc'hae e nerz e-unan, evid ma vije maget ar re reiz.

24. Rag ar hrouadur o senti ouzit evel ouz e grouer, a gresk e nerz evid heskina ar re zireiz, hag en em habaska evid ober vad d'ar re a laka o fizañs ennout.

25. Rag se ar mann oh en em gemma e meur a vlaz, a zente ouz da hras pehini eo boued an oll, hag en em aoze diouz c'hoant ar re a ziskoueze dit o ezomm,

26. Evid ma ouezje da vugale, pere a garez, o ! Aotrou, penaoz n'eo ket ar frouez a gresk war an douar a vag an dud, hogen ma eo da her a vir ar re gred ennout.

27. Rag ar pez na helle ket beza bevezet gand an tan, a deuze kerkent ha ma teue da domma gand an disterra bann-heol :

28. Evid ma vije anad d'an oll, penaoz eo red diaraogi an heol evid benniga ahanout, hag e tleer da azeuli da darz-an-deiz.

29. Rag ged an den dizanaoudeg a deuzo evel skorn ar goañv, hag zinaouo evel dour didalvez.

XVII.Pennad.

Teñvalijenn an Ejipt.

1. Braz eo da varnou, o ! Aotrou, ha dilavaruz eo da heriou : rag se eo faziet an eneoù diskiant.

2. Rag ar re fallagr o veza lakaet en o fenn penaoz e helljent aotrounia ar vroad santel, a zo bet ereet gand eur chadenn a deñvalijenn hag eun noz hir ; ha serret kloz en o zi, int deuet da weñvi, heb gelloud tehi diouz ragwel peurbaduz Doue.

3. Ha pa gave dezo e helljent en em guza dindan teñvalijenn o fehejou, e oent skignet, ha lakaet en ankounac'h dindan eur ouel deñval, hag i leun a spont, hag enkrezet gand eur zaouzan vraz.

4. Ar heviou e pere en em dennent ne ziwallent ket anezo euz ar spont ; rag trouz a glevant, hag i o-doa aon ; teuziou gweñvet en em ziskoueze dezo, hag i a oa leun a euz.

5. Ar brasa tan ne helle ket rei goulou dezo, hag ar flamm skeduz euz ar stered ne helle ket sklêrraad an noz euzuz-se.

6. Bez' en em ziskoueze dezo raktal luhed tan, o leunie a aon ; hag o veza spontet-braz gand an teuziou a welent a-veh, ar pez a welent a oa c'hoaz gwasoh war o meno.

7. Ha breou ar strobineleou a oe didalvez, hag ar furnez gand pehini e fougeent a droas e dismegañs.

8. Hag i pere, war o meno, a gase kuit an enkreuz hag ar saouzan euz an eneoù doaniet, a oa doaniet o-unan en eun doare lu, gand ar spont a oa kroget enno.

9. Petra bennag n'en em ziskoueze dezo netra a gement a hellje o enkrezi, al loened a yee e-biou, hag an naered a hwibane o strafuille, hag o lakae da vervel gand ar spont : ha c'hoant o-divije bet da veva heb êr, ar pez na hell den da ober.

10. Rag o veza ma eo aonig an drougiez, e ro heh-unan testeni d'he barnedigez ; ha spontet gand ar gwall goustiañs, e wel an droug gwasoh eged ne deo.

11. An aon n'eo ken nemed strafuill an ene a gred dezañ beza dilezet gand an oll.

12. Ha seul nebeutoh e hortoz a frealzidigez ennañ e-unan, seul vui e kresk heb e anaoud an abeg en-deus d'en em enlrezi.

13. Hogen i, o veza neuze gweñvet gand eun heveleb kousk, en noz spontuz-se, a oa deuet dezo euz a oueled an ivernou,

14. A oe spontet a eun tu gand an teuziou en em ziskoueze dezo, hag a eun tu all e teue o halon da fata ; rag saouzanet e oant gand spontou taer, ha na hortozent ket.

15. Goude-ze mar koueze eur re anezo, e chome serret evel en eur vah heb chadenn.

16. Mar deue eur houëriad, pe eur mesaer, pe eul labourer diwar ar mêz da veza kemeret war an taol, e oa red dezañ chom heb gelloud tehi :

17. Rag en heveleb chadenn a deñvalijenn o eree oll. Eun avel a hweze, kan dudiuz an evned war skourrou bodenneg ar gwez, red herruz an dour,

18. An trouz braz a ree ar vein o koueza, keflusk al loened a hoarie kevred heb ma o gwelent, blejerez al loened fero, pe an hekleo a zone euz a geviou ar menezioù : kement-se oll o lakae da vervel gand spont.

19. Ar bed oll nemeto a oa sklêrraet gand eur goulou pur, ha pep hini a ree e labour heb harz ebed.

20. An noz du ne holoe nemeto ; eur skeudenn e oa euz an deñvalijenn e pehini e tleent da goueza. Kasasoh e oant eta dezo o-unan eged an deñvalijenn.

XVIII. Pennad.

Maro ar re genta-ganet euz an Ejipt.

1. Hogen, Aotrou, da zent a oa sklêrraet gand eur goulou braz, hag i a gleve mouez ar re-ze, heb o gweloud. Hag i a veule ahanout, o veza na houzañvent ket an heveleb poaniou.

2. Trugarekaad a reent ahanout, o veza na oant mui heskinet gand ar re o heskine kent : hag e houlennent diganez ma padje bepred an disheñveldigez-se.

3. Rag se o-deus bet eur peul tan da rener en eun hent na anavezant ket, hag a oa dezo evel eun heol ha na ziêze ket anezo, hag a roe dezo eun ergerz mad.

4. Hogen ar re all a zelleze dioueri ar goulou, ha gouzañvi eur vah a deñvalijenn, i pere a zalhe serret da vugale, dre bere goulou glan da lezenn a zeraoue beza skignet dre ar bed.

5. Hag o veza m'o-doa lakaet en o fenn laza mibien an dud reiz, goude ma ez-poe dieubet unan anezo pehini a oa bet dilezet war an dour, evid o hastiza eh-eus lakaet da vervel eul lod braz euz o mibien, hag eh-eus o hollet e goueled an dour.

6. An noz-se a oa bet diouganet d'on tadou, evid pa anavezant ar pez en-doa touet Doue dezo, hag o-doa kredet, e teujent da veza dizaouzan.

7. Evel-se da bobl a welas en heveleb amzer dieub ar re reiz, ha dispenn ar re zireiz.

8. Rag evel-se eh-eus kastizet on enebourien, eh-eus ivez or galvet hag on uhellaet meurbed.

9. Koulskoude ar re reiz, mibien ar zent, a ree o zakrifisou e kuz, hag e lakajont gand unvaniez lezenn ar reiz dre behini e kemerjent en eun doare kevatal ar mad hag a droug : hag i a gane a neuze ar meuleudiou a oa bet desket dezo gand o zadou.

10. Hogen bez' e klevet mouez vezuz o enebourien, ha garmou keinvanuz ar re a wele maro o mibien.

11. Ar sklav a oa gwanet evel e aotrou, hag an disterra euz ar bobl evel ar roue e-unan.

12. Evel-se ez oa dreist-oll marvou diniver, hag an oll a oa skoet gand an heveleb maro. Ne oa ket a-walh euz ar re veo evid bezia ar re varo ; rag ar re greñva euz a bep tiad a oa bet dispennet en eun taol.

13. N'o-doa ket kredet d'an oll vurzudou all en abeg d'o strobinnerien ; hogen goude ma oe dispennet o re genta-ganet, eh anzavjont penaoz e oa hounnez pobl Doue.

14. Rag pa edo pep tra en eun ehan didrouz, ha pa edo an noz e-kreiz he red hag he hent,

15. Da her ollhalloudeg a zeuas euz an neñv, euz e dron a roue, hag evel eur brezeliad kriz e tilammaas war an douar-ze a dlee beza dispennet.

16. Gand eur hleze lemm en e zorn, e touge da varn didorruz hag e leunias pep tra a varo : hag eñ en e zav war an douar a dize beteg an neñv.

17. Neuze e oent enkrezet war eun dro gand gweledigezou hag huñvreou euzuz, hag eur spont taer a grogas enno.

18. Hag unan taolet en eun tu hanter-varo, hag eun all en eun tu all, a ziskoueze an abeg euz o maro.

19. Ar gweledigezou gand pere e oant bet spontet, o-doa roet da anaoud kement-se dezo a-raog, gand aon na varvjent heb gouzoud an abeg euz an drougou a houzañvent.

20. Evid gwir ar re reiz o-doe ivez eun taol a varo, hag ar bobl a oe skoet gand eur gouli en distro : hogen da vuaneged ne badas ket pell.

21. Rag eun den dinamm a hastas da bedi evid ar bobl ; lakaad a reas da eubi dit tirenn e zervij ; hag e bedenn o pigna etrezeg ennout gand an ezañs a ginnige dit, a zioullaas da vuaneged, hag a lakaas ar gouli da ehana, hag a ziskouezas penaoz e oa da zervijer.

22. Ne drehas ket an enkreze-se gand nerz ar horv, na gand galloud an armou, hogen enebi a reas ouz an dispenser, o rei da goun dezañ ar pez a oa bet touet d'o zadou, hag ar gevredigez a oa bet greet ganto.

23. Pa oa dija berniou tud varo kouezet an eil war egile, en em lakaas etrezo, hag eh harzas ouz ar froudenn, hag e rannas an hent a gase etrezeg ar re a oa beo.

24. Rag ar bed all a oa doareet gand ar zae hir a zouge ; anoïou braz an tadou-koz a oa kizellet war pevar reiz mein talvouduz, ha da ano kaer-meurbed a oa kizellet war dalgenn e benn.

25. O weloud kement-se eh ehanas an dispenser, hag e oe spontet ganto ; rag a-walh e oa beza diskouezet dezo an arnod-se euz da vuaneged.

XIX. Pennad.

Burzudou Doue e-keñver e bobl en distro.

1. Hogen buanegez Doue a gouezas war ar re fallagr beteg an diwez ; rag eñ a wele a-raog ar pezh a dlee beza da hoarvezoud ganto.
2. Rag i goude beza aotreet gand an Izraelited mond kuit, ha goude beza o lezet da vond gand kalz a hast, o-doe keuz kerkent, hag a yeas war o lerh.
3. Pa edo c'hoaz an daerou en o daoulagad, ha pa leñvent e-tal beziou o mibien varo, e teuas dezo eur mennoz all, eur mennoz diskiant : mond a rejont war-lerh ar re o-doa kent pedet stard da vond kuit.
4. Da gement-se e oant kaset gand eur redi o-doa dellezet : kollet e oa ganto an eñvor euz ar pezh a oa c'hoarvezet ganto, evid ma teuje ment o hastiz da veza leuniet gand ar pezh a oa red evid o feurenkrez :
5. Ha ma teuje da bobl eun heveleb amzer da dreuzi ar mor en eun doare burzuduz, pa zeuje-hi da gavoud ar maro en eun doare nevez.
6. Da oll grouadurien, evel er penn kenta, pep hini hervez e ouenn, a gemere eun doare nevez, evid senti ouz da hourhemennou, hag evid miroud na ve gloazet da zervijerien.
7. Eur goabrenn a holoas o hamp euz he skeud, hag euz an dour a oa a-raog e savas eun douar seh ; e-kreiz ar mor Ruz e oe kavet eun hent diharz, hag e goueled ar poull eur park goloet a heot,
8. Dre behini e tremenas an oll bobl-se a warezas gand da zorn, hag a wele da aroueziou ha da vurzudou.
9. En em laouennaad a rejont evel kezeg er peuri ; sailla a rejont evel ein, oh da veuli, Aotrou, te pehini ez-poa o zennet a boan.
10. Koun o-doa c'hoaz euz ar pezh a oa c'hoarvezet er vro e pehini e oant chomet evel tud divroet, penaoz an douar, e-leh anevaled all, en-doa lakaet da zével kelien, hag ar ster, e-leh pesked, eul lod braz a raned.
11. Pelloh e weljont eur rumm nevez a evned, pa'z eus c'hoant dezo da zebri kig c'hwek, hag e houlennjont digand Doue.
12. Rag evid rei o hoant dezo, e lakaas da zével euz ar mor eul lod braz a goailled ; hag ar poaniou na gouezjont ket war ar beherien heb ma teuas aroueziou dezo gand kurunou braz : rag i a houzañve gand reizded ar pezh a oa dleet d'o gwallou.
13. Rag i a oa bet gwall-griz e-keñver an diavêzidi ; ar re all ne zegemerent ket an diavêzidi ha na anavezent ket ; ar re-mañ a zegemere ar re ha n'o-doa greet nemed vad dezo, hag o lakae da sklaved.
14. Hag ouspenn c'hoaz, ar re all a zo bet kastizet, o veza m'o-doa degemeret diavêzidi, evel ma vent bet da enebourien dezo.
15. Hogen ar re-mañ a wall-heskine ar re o-doa degemeret gand levenez, hag a veve ganto dindan an heveleb lezennou.
16. Dre ze e oent skoet a zallentez, evel ma oe ar re all e-tal dor an den reiz, pa oent goloet en eun taol a zeñvalijenn, ha na gave hini anezo dor e di.
17. Rag an elfennoù a gemm o reiz etrezo, hep kolla o unvaniez o-unan, evel ma teu an êr da gemma en eur benveg⁴⁰⁴, heb ma teu ar zon da veza kollet : kement-se a heller da weloud splann er pezh a hoarvezas neuze.
18. Rag loened an douar a oe gwelet e-leh loened an dour ; hag ar re a neuze a dremenas war an douar.

⁴⁰⁴ eur benveg : eur biniou.

19. An tan a-eneb e aoz e-unan a zeve en dour, hag an dour oh ankounac'haad ivez e aoz, ne vouge ket an tan.

20. Ar flammou en eneb ne zevent ket kig bresk al loened kaset gand Doue, ha ne lakaent ket da deuzi ar boued c'hwek a deuze koulskoude ken êz hag ar skorn. Rag uhellaet hag enoret eh-eus, Aotrou, da bobl e pep tra ; n'eh-eus ket he disprizet, hag he skoazellet eh-eus e peb amzer hag e peb leh.

Levr ar PREZEGER PE AN EKLEZIASTIK

1 .Pennad

Gounid euz a zoujañs Doue.

1. An oll furnez a zeu euz an Aotrou Doue, gantañ eo bet a-viskoaz, hag a-barz an amzeriou e oa.

3. Piou en-deus niveret trêz ar mor, hag ar banneou glao, ha deiziou ar bed ? Piou en-deus mentet uhelder an neñv, ehonder an douar, ha donder al lonk ?
4. Piou en-deus sellet piz ouz furnez Doue, pehini a ziaraog pep tra ?
5. Ar furnez a zo bet krouet ar genta oll, ha skiant ar poell a zeu euz ar penn kent.
6. Ger Doue en uhella euz an neñv eo mammenn ar furnez, hag he heñchou eo ar gourhemennou peurbadu.
7. Da biou eo bet disklêriet gwriziou ar furnez, ha piou en-deus anavezet heh ijinou
8. Da biou eo bet disklêriet ha roet da anaoud renadur ar furnez ? Ha piou en-deus poellet al lod braz euz he hammejou ?
9. N'eus nemed an Uhel-meurbed, ar Hrouer Ollhalloudeg, ar Roue galloudeg, ha doujuz-braz, a zo azezet war e dron, an Doue treher.
10. Eñ eo en-deus he hrouet er spered santel, en-deus he gwelet, en-deus he niveret, hag en-deus he mentet.
11. He skuillet en-deus war e oll oberiou, ha war bep kig, hervez ar rann en-deus greet anezi, hag he roet en-deus d'ar re e gar.
12. Doujañs an Aotrou eo ar hloar, hag ar veuleudigez, hag al levenez, ha kurunenn an dudi.
13. Doujañs an Aotrou a ziduello ar galon, hag a roy al levenez, hag an dudi, hag ar vuhez hir.
14. Neb a zouj an Aotrou en em gavo ervad e diwez e vuhez, hag a vezo benniget e deiz e varo.
15. Karantez Doue eo ar furnez enoruz.
16. Ar re da bere en em ziskouez, kerkent ha ma en em ziskouezont-i, ha ma o-deus anavezet ar brazder euz e oberiou.
17. Derou ar furnez eo doujañs an Aotrou ; krouet eo gand an dud reiz adaleg kov o mamm ; gand ar gwragez dilennet e kerz ; hag en dud reiz ha feal eh anavezet anezi.
18. Doujañs an Aotrou eo santellidigez ar ouiziegez.
19. Ar zantellidigez a vir ar galon, hag he laka da veza reiz, he leunia a ra a zudi hag a levenez.
20. Neb a zouj an Aotrou a vezo eüruz, hag e deiz e varo e vezo benniget.
21. Doujañs Doue eo leunder ar furnez ; leunia a ra an den fur gand he frouez.
22. Leunia a ra e di gand e vadou, hag e gaviou gand e deñzoriou.

23. Doujañs an Aotrou eo kurunenn ar furnez ; rei a ra leunder ar peoh, ha frouez ar zilvidigez.
24. He gweloud hag he niveri a ra : eur ro digand Doue eo an eil hag eben.
25. Ar furnez a skuill ar ouiziegez, ha goulou ar poell ; sevel a ra e gloar ar re a zalh eviti.
26. Gwrizienn ar fiziañs eo doujañs an Aotrou, hag he skourrou a zo hirhoaluz.
27. Ar poell ha gouiziegez ar feiz en em gav e teñzoriou ar furnez ; hogen ar furnez a zo argaruz d'ar heherien.
28. Doujañs an Aotrou a gas kuit ar pehed.
29. Rag an hini a zo heb doujañs, ne hello ket beza didamallet ; rag froudenn e vuanegez eo e goll.
30. An den habask a houzañvo beteg an amzer, ha goude-ze e vezo roet adarre al levenez dezañ.
31. An den a skiant vad a zalho e heriou ennañ e-unan beteg eun amzer, ha muzellou meur a hini a zanevello e skiant.
32. E teñzoriou ar furnez ema red ar vuhezegez.
33. Hogen kehelidigez Doue a vezo argaruz d'ar peher.
34. Va mab, ma c'hoantaez stard ar furnez, mir ar reizded, ha Doue he roy dit.
35. Rag doujañs an Aotrou eo ar furnez, hag ar ouiziegez : hag ar pez a zo hetuz dezañ,
36. Eo ar feiz hag ar guñvez : hag eñ a leunio e deñzoriou.
37. Na eneb ket ouz doujañs an Aotrou : ha na dosta ket outañ gand da vuzellou.
38. Na vez ket pilpous dirag an dud, ha na ro ket a wall-skwer gand da vuzellou.
39. Laka evez outo, gand aon na gouezjes, ha na zegasjes dismegañs war da ene ;
40. Ha na zisrevelfe Doue ar pez a oa kuzet ennout, ha na vrevje ahnout e-kreiz ar strollad :
41. O veza ma out tostaet ouz an Aotrou gand drougiez, ha ma eo leun da galon a douellerez hag a droidellerez.

II. Pennad.

Gwa d'ar galon daoubleg, ha d'an hini na laka ket e fiziañs e Doue.

1. Va mab pa'z i e servij Doue, chom stard er reizded, hag en doujañs, hag aoz da ene a-eneb ar gwall-youl.
2. Izela da galon, ha gouzañv : dinaou da skouarn, ha degemer lavariou ar poell ; ha na hast ket e amzer an deñvalijenn.
3. Gouzañv gourzevou Doue ; en em unan gand Doue, ha gouzañv, evid ma vezo founnoh da vuhez en diwez.
4. Degemer a galon vad kement a hoarvezo ganez : chom e peoh en da hlahar, ha bez habask en da uvelder.
5. Rag en tan eo eh arnoder an aour hag an arhant, hogen e fornigell an uvelded e tegemerer an dud.

6. Kred e Doue, hag eñ az tizhaouo : laka da hent da veza eeun, ha laka da hed ennañ. Mir e zoujañs, ha kosa ennañ.

7. Mar doujit an Aotrou, gortozit e drugarez : ha na zistroit ket dioutañ, gand aon na gouezfeh.

8. C’hwi pere a zouj an Aotrou, kredit ennañ ; ha ne gollot ket ho kobr.

9. C’hwi pere a zouj an Aotrou, likit ho ked ennañ ; hag an drugarez a zeuy d’ho laouennaad.

10. C’hwi pere a zouj an Aotrou, karit anezañ ; hag ho kalonou a vezo goulaouet.

11. Sellit, va mibien, ouz tud ar broadou : ha gouezit penaoz, hini euz ar re o-deus lakaet o ged en Aotrou, n’eo bet touellet.

12. Rag piou eo an hini a zo chomet stard en e hourhemennou, hag a zo bet dilezet ? Pe piou eo an hini en-deus e halvet, hag a zo bet disprizet gantañ ?

13. Rag Doue a zo mad ha trugareg : hag e tistaol ar pehejou e deiz an enkreuz : eñ eo a zifenn kement hini a glask anezañ er wirionez.

14. Gwa d’ar galon daoubleg, ha d’ar gwall vuzellou, ha d’an daouarn droug, ha d’ar peher a gerz war an douar dre zaou hent.

15. Gwa d’ar re zigalon, pere ne gredont ket e Doue, ha pere dre ze n’int ket difennet gantañ.

16. Gwa d’ar re o-deus kollet an habaskded, o-deus dilezet an heñchou eeun, hag a zo distroet dre wall heñchou.

17. Ha petra a raint-i, pa zeraouo an Aotrou arvesti pep tra ?

18. Ar re a zouj an Aotrou, na vezint ket diskredig d’e her : hag ar re a gar anezañ, a viro e hent.

19. Ar re a zouj an Aotrou, a enklasko ar pezh a zo hetuz dezañ : hag ar re a gar anezañ, a vezo leuniet gand e lezenn.

20. Ar re a zouj an Aotrou, a aozo o halonou ; hag e santellaint o eneou dirazañ.

21. Ar re a zouj an Aotrou, a viro e hourhemennou hag o-devezo habaskded ken na zello outo.

22. O lavaroud : Ma ne reom pinienn, e kouezim etre daouarn an Aotrou, ha nann etre daouarn an dud.

23. Rag evel ma eo braz e veurded, ez eo braz ivez e drugarez.

III. Pennad.

Azaouez e-keñver an tadou hag ar mammou.

1. Mibien ar furnez eo strollad ar re reiz : hag o fobl eo ar zentidigez hag ar garantez.

2. Selaouit, bugale, barn ho tad, ha grit en heveleb doare ma viot salvet.

3. Rag Doue en-deus enoret an tad er vibien : hag en-deus enklasket ha startaet barn ar vamm war ar vibien.

4. An hini a gar Doue, a bedo evid e behejou, hag en em viro diouto ; ha goude beza pedet a-zoug meur a zevez e vezo selaouet outañ.

5. An hini a enor e vamm, ‘zo evel an hini a zastum eun teñzor.

6. An hini a enor e dad, a vezo laouennaet en e vugale, hag e deiz e bedenn e vezo selaouet outañ.

7. An hini a enor e dad, en-devezo eur vuhez hir : hag an hini a zent ouz e dad, a frealzo e vamm.
8. An hini a zouj an Aotrou a enor e dud, hag eñ a zervijo evel pa vent e vistri, ar re o-deus roet ar vuhez dezañ.
9. Enor da dad gand da oberiou, gand da lavariou, ha gand habaskded,
10. Evid ma vennigo ahanout, ha ma chomo e vennoz warnout beteg an diwez.
11. Bennoz an tad a starta tiez ar vibien : hogen malloz ar vamm o diskar beteg an diazez.
12. Na fougé ket gand dismegañs da dad : rag e vezegez n'eo ket da hloar dit.
13. Gloar eun den eo enor e dad, hag eun tad heb enor 'zo mezeger e vab.
14. Va mab, ro frealz d'az tad en e gozni : arabad eo dit glahari anezañ a-hed e vuhez.
15. Mar deu e skiant da zisleberi ; gouzañv eñ, ha na zispriz ket anezañ en abeg d'az nerz : rag da azaouez e-keñver da dad ne vezo ket ankounac'haet.
16. Rag vad a zeuy dit evid beza gouzañvet nammou da vamm.
17. Er reizder e vezi savet, hag e deiz an enkrez ne vezi ket ankounac'haet : ha da behejou a deuzo evel ar skorn en eun deiz klouar.
18. Peger fallagr eo an hini a zilez e dad : ha pegement eo milliget gand Doue, an hini a heg e vamm !
19. Va mab, gra pep tra gand kuñvelez, ha dreist gloar an dud e vezi karet.
20. Seul vui ma out braz, en em uvela e pep tra, hag e kavi gras dirag Doue.
21. Rag n'eus nemed Doue a gement a ve braz ar galloud, ha gand ar re uvel eo enoret.
22. Na enklask ket ar pezh a zo uheloh egedout, ha na hwil ket ar pezh a zo kreñvoh egedout : hogen az-pezh koun bepred e kement en-deus gourhemennet Doue dit, ha na zell ket piz ouz an darn-vuia euz e oberiou.
23. Rag n'eo ket red dit gweloud gand da zaoulagad an traou a zo kuzet.
24. Na enklask ket gand preder an traou ha n'eo ket red dit da houzoud, ha na zell ket piz ouz an darn-vuia euz a oberiou Doue.
25. Rag diskouezet eo⁴⁰⁵ bet dit kalz traou hag a oa dreist skiant an dud.
26. Rag meur a hini a zo bet touellet gand o gwall vennoziou, hag a zo bet dalhet er gevier gand o skiant fall.
27. Ar galon galed a vezo poaniet e diwez he buhez ; ha neb a gar ar riskl, a gouezo ennañ.
28. Ar galon a gerz dre zaou hent, na'z ay ket da benn ; hag an ene saotret a gemero gwall skwer euz a gement-se.
29. Ar galon fallagr a vezo leun a hlahar, hag ar peher a vernio pehed war pehed.
30. Ne vezo ket a wellaenn evid strollad ar re rog ; rag taol ar pehed a wrizienno enno, heb gouzoud dezo.
31. Kalon an den fur a vezo anavezet diouz he furnez, ha skouarn an den mad a zelaouo ar furnez gand beoder.
32. Ar galon fur ha poelleg en em viro diouz ar pehejou, hag hi a yelo da benn e oberiou ar reizded.
33. An dour a voug an tan al leskidika, hag an aluzenn a harz ouz ar pehejou.
34. Doue a zell ouz an hini a ra an aluzenn : koun en-deus anezañ en amzer da zond, hag eñ a gavo kennerz en amzer e pehini e kouezo.

⁴⁰⁵ eo : ez eus

IV. Pennad.

Mad eo ober an aluzenn ha beza trugareg e-keñver ar beorien.

1. Va mab, na zinah ket an aluzenn d'ar beorien, ha na zistro ket da zaoulagad diwarnezo.
2. Na zispriz ket an hini en-deus naon, ha na heg ket ar paour en e ziegez.
3. Na hlahar ket kalon ar paour, ha na zale ket da rei da neb en-deus ezomm.
4. Na zistaol ket pedenn an hini a zo en anken : ha na zistro ket da zaoulagad diwar an hini a zo ezommeg.
5. Na zistro ket da zaoulagad diwar ar paour, gand aon na zavje droug ennañ; ha na ro ket abeg d'ar re a houlen diganez da villizien a-dreñv kein :
6. Rag an hini a villig ahanout e c'hwevder e ene, a vezo klevet outañ en e zroug-pedenn ; klevet e vezo gand an hini en-deus e hreet.
7. Bez hegarad e strollad ar beorien, uvela da ene dirag an henaoured, hag uvela da benn dirag ar re vraz.
8. Diskenn da skouarn heb doan etrezeg ar paour, ha ro dezañ ar pezh a zleez, ha komz outañ gand habaskded ha gand kuñvez.
9. Tenn euz a zorn eun den rog an hini a zo heskinet : ha na zeuet ket a hwevder en da ene.
10. Pa varni, bez truezeg evel eun tad e-keñver an emzivadeg, ha bez da ozah d'o mamm.
11. Ha te a vezo evel eur mab sentuz d'an Uhel-meurbed ; hag eñ en-devezo truez ouzit dreist eur vamm.
12. Ar furnez a laka ar vuhez da zével en he bugale ; degemeroud a ra ar re a glask anezi, hag ez a en o raog e hent ar reizded.
13. An hini he har, a gar ar vuhez : hag ar re a veillo evid he havoud, a berhenno he feoh.
14. Ar re a zalho anezi, o-devezo ar vuhez da zegouez ; hag al leh e pehini ez aint a vezo benniget gand Doue.
15. Ar re a zervij anezi, a zento ouz ar sant, hag ar re a gar anezi a vezo karet gand Doue.
16. An hini a zelaou anezi, a varno ar broadou : hag an hini a arvest anezi a chomo stard.
17. Ma en-deus fiziañs enni, e vezo-hi da zegouez dezañ, hag e nested en-devezo anezi.
18. Rag en arnod e vale gantañ, hag etre ar re genta e tilenn anezañ.
19. E gas a ray en aon, er spont hag en arnodou : e hega a ray gand enkreiz he helennou, ken n'en-devezo c'hwiliet en e vennoziou, ha ma helllo-hi fizioud en e ene.
20. E greñvaad a ray ; distrei a ray etrezeg ennañ dre eun hent eeun, hag e laouennaay anezañ.
21. Diskoueza a ray dezañ ar pezh he-deus da guzeta, hag e lakay ennañ eun teñzor a ouiziegez hag a boell euz ar reizded.
22. Hogen mar deu-eñ da fazia, e tilezo-hi anezañ, hag hel lakay etre daouarn e enebour.
23. Va mab, mir an amzer, ha pella diouz an droug.

24. E talvoudegez da vuhez, n'az-pezh ket a vez o lavaroud ar wirionez.
25. Rag eur vez a zo hag a zegas ar pehed, hag eur vez a zo hag a zegas ar hloar hag ar hras.
26. Na zell ket ouz dremm an den e koll da zilvidigez, ha n'en em ro ket d'ar gevier e koll da ene.
27. Na enor ket da nesa en e lamm :
28. Ha na zalh ket da her e amzer ar zilvidigez. Na guz ket da furnez en he sked.
29. Rag en teod en em ziskouez ar furnez : hag ar skiant, hag ar ouiziegezh, hag ar gelennadurezh en em ziskouez e lavar an den skianteg ; hag e starder e oberiou ar reizded.
30. Na ebed e neb doare ebed ouz lavar ar wirionez ; hag az-pezh mez eus ar gevier e pere out kouezet dre ziouiziegezh.
31. N'az-pezh ket a vez oh anzavoud da behejou ; hogen na bleg ket da beb den evid ar pehed.
32. Na eneb ket ouz dremm an den galloudeg, ha na harz ket ouz red ar ster.
33. Stourm evid ar reizded e gounid da ene, hag en em gann beteg ar maro evid ar reizded, ha Doue a stourmo evidout e-eneb da enebourien.
34. Na vez ket taer en da lavar, ha didalvez ha gorreg en da oberiou.
35. Na vez ket evel eul leon en da di, oh heskina da zervijerien, hag o vaha ar re a zo dindan da halloud.
36. Na vezet ket digor da zorn evid degemeroud, ha serret evid rei.

V. Pennad.

Red eo chom stard e hent an Aotrou.

1. N'en em harp ket war ar madou direiz, ha na lavar ket : Peadra em-eus evid beva : rag kement-se ne vezo mad da netra e amzer ar veñjañs hag an deñvalijenn.
2. Na heul ket en da nerz gwall-youlou da galon :
3. Ha na lavar ket : Penaoz em-eus-me gelllet ? Pe piou am lakay da blega evid va oberiou ? Rag Doue evid gwir en em veñjo.
4. Na lavar ket : Pehet em-eus, ha pe zoan a zo c'hoarvezet din euz a gement-se ? Rag an Uhel-meurbed a zo gorreg o kastiza.
5. Na vez ket heb aon diwar-benn ar pehed a zo bet distaolet dit, ha na vomm ket⁴⁰⁶ pehed war pehed.
6. Ha na lavar ket : Braz eo trugarez Doue, euz va fehejou niveruz-braz en-devezo truez.
7. Rag mar deo braz e drugarez, e vuanegezh ivez a zo taer ; hag en e vuanegezh e sell ouz ar beherien.
8. Na zalee ket da zistrei ouz an Aotrou, ha na hourzez ket a zeiz e deiz.
9. Rag e vuanegezh a zeuy en eun taol, hag e amzer ar veñjañs e kollo ahanout.
10. N'en em reustl ket evid kaoud madou direiz ; rag ne vezint mad da netra dit e deiz an deñvalijenn hag ar veñjañs.
11. Na dro ket da beb avel, ha na'z a ket dre beb hent ; rag evel-se eo en em ro da anaoud ar peher dre e deod daou-bleg.

⁴⁰⁶ na vomm ket : na vergn ket (?)

12. Bez stard e hent an Aotrou, hag e gwirionez da skiant, hag en da ouiziegez, ha ra vezo bepred ganef ar ger a beoh hag a reizded.

13. Selaou gand habaskded ar pezh a leverer dit, evid ma e boelli, ha ma roi gand furnez eur respont gwir.

14. Mar dout poelleg, respont d'az nesa : ma n'out ket, laka da zorn war da henou, gand aon na ves paket en eul lavar dievez, ha na gouezjes en dismegañs.

15. An enor hag ar hloar a zo e lavar an den skianteg, hogen teod an den dievez eo da goll dezañ.

16. Na dremen ket evid eun teodeg, ha na zeuet ket da deod da lindag ha da vezegez dit.

17. Rag war al laer e kouez ar vezegez hag ar heuz, hag eur varn gwasoh c'hoaz war an teod daou-bleg : hogen an teodeg a zedenn warnezañ ar gasoni, an drougiez, hag an dismegañs.

18. Barn en heveleb doare an den dister, evel an den braz.

VI. Pennad.

Dibaot eo eur gwir vignon.

1. Na zeu ket da enebour d'az nesa pehini a oa da enebour dit : rag an den droug en-devezo da zegouez ar vez hag ar vezegez, kerkoulz hag ar peher erezuz, hag an hini a zo daou-bleg e deod.

2. N'en em uhella ket evel eun taro e mennoziou da galon, gand aon na ve brevet da nerz gand da follentez,

3. Na lonko da zeliou, ha na gollo da frouez, ha na zeui evel eur wezenn dizehet en distro.

4. Rag ar gwall ene a gollo an hini e pehini en em gavo ; e lakaad a ray da levenez evid e enebourien, hag e roy dezañ darvoud ar re fallagr.

5. Ar ger c'hwek a hounid kalz a vignoned, hag a habaska an enebourien : ha teod eun den mad a zo dudiu-braz.

6. Bez e peoh gand meur a hini, hogen na gemer da guzulier nemed unan etre mil.

7. Mar fell dit kaoud eur mignon, kemer eñ goude m'az-pezo e arnodet, ha na laka ket raktal da fiziañs ennañ.

8. Hemañ a vezo mignon dit hervez an amzer vad, ha ne gendalho ket e deiz an enkreiz.

9. Hennez a vezo mignon, hag a droy da enebour : eun all a vezo mignon, hag a ziskouezo e gas, hag a lavaro flemmou ha kunuhennou dit.

10. Eun all a vezo mignon evid an daol, ha ne gendalho ket e deiz an dienez.

11. Mar chom stard, da vignon a vezo evel da bar dit, hag e-touez tud da di ez embrego da frankiz :

12. Ma en uvela dirazout, ha mar kuz a-zirag da zaoulagad, eur garantez vraz ho-pezo an eil evid egile.

13. En em rann diouz da enebourien, ha laka evez ouz da vignoned.

14. Eur mignon feal a zo eur gwarez kreñv : neb en-deus e gavet, en-deus kavet eun teñzor.

15. Netra ne hell beza hevelebekaet ouz eur mignon feal, hag an aour hag an arhant ne zellezont ket beza lakaet e pouez ouz c'hwekder e feiz.

16. Eur mignon feal a zo eul louzou a ro ar vuhez, hag ar beurbadelez : hag ar re a zouj an Aotrou, a gavo anezañ.

17. Mar douj eun den Doue, e kavo dre ze eur garantez vad ; rag e vignon a vezo heñvel outañ.

18. Va mab, adaleg da yaouankiz, en em ro d'ar gelennadurez, hag e kavi ar furnez beteg da gozni.

19. Evel an hini a zo oh arad hag oh hada, tosta outi, ha gortoz frouez mad diouti.

20. Laboura a ri eun nebeud evid he diorren, ha nebeud goude e tebri euz he frouez.

21. Pegen c'hwero eo ar furnez evid an dud diouizieg ; an den diskiant ne chomo ket ganti.

22. Bez' e vezo evito evel ar vein arnod ; hag i ne zaleint ket d'he banna er-mêz.

23. Rag ar furnez a laka da veza poelleg, evel ma tiskouez heh ano ; ha n'eo ket anad evid kalz a dud : hogen er re gand pere eo anavezet, e chom beteg gweledigez Doue.

24. Selaou, va mab, kuzul ar furnez, ha na zistaol ket va ali.

25. Laka da dreid en e hualou, ha da houzoug en e gelhennou.

26. Soubl da skoaz, ha doug hi, ha na skuiz ket en e chadennou.

27. Tosta outi gand da oll galon, ha mir he heñchou gand da oll nerz.

28. Enklask hi, hag hi en em ziskouezo dit ; ha pa'z-pezo he briatet, na zilez ket anezi :

29. Rag en diwez e kavi da ehan enni, hag e troy he dudi evidout.

30. Hag he hualou a vezo dit da warez ha da gennerz, hag he helhenn da eur zae a hloar ;

31. Hag eur sked a vuhez a zo enni, hag he chadennou a zo lienennou a baredigez.

32. He gwiska a ri evel eur zae a hloar, hag he lakaad a ri warnout evel eur gurunenn a levenez.

33. Va mab, mar selaouez ahanon, e teski : ha ma lakaez da spered da aketi, e vezi fur.

34. Mar dinaouez da skouarn, e tegemeri ar ouiziegez : ha mar karez selaoui, e vezi fur.

35. En em zalh e strollad ar gozidi fur, hag en em unan a galon gand o furnez, evid ma helli selaoui kement a livirint dit diwar-benn Doue ; ha na goll hini euz o lavariou mad.

36. Mar gwelez eun den a skiant, kee abred d'e gavoud, ha mah aliez gand da droad treuzou e zor.

37. Laka da vennoz e kelennoù Doue, hag bez aketuz d'e hourhemennou : hag eñ a roy dit eur galon deskidig ; ha youl ar furnez a vezo roet dit.

VII. Pennad.

Meur a ali.

1. Na ra ket a zroug, ha ne grogo ket ennout.

2. Pella diouz an den fallagr, hag an droug a bellay diouzit.

3. Va mab, na had ket an droug e irvi an direizded, gand aon na vedjes seiz gwech kemend-all anezo.

4. Na houlen ket digand an Aotrou ar renerez, na digand ar roue ar gador a enor.

5. N'en em zidamall ket dirag Doue, rag eñ eo a anavez ar halonou ; ha na glask ket beza fur da weloud dirag ar roue.

6. Na glask ket dond da varner ma n'eh-eus ket an nerz da derri ar fallagriezou ; gand aon na ves saouzanet gand dremm ar re vraz, ha na zeuje da reizded da wall-skwer.

7. Na beh ket ouz oll dud eur gêr, ha n'en em laka ket e-touez ar bobl.

8. Na ere ket pehed ouz pehed : rag ne chomo ket digastiz unan hepken.

9. Na gouezet ket da galon e fillidigez.

10. Na ankounac'ha ket pedi, ha rei an aluzenn.

11. Na lavar ket : Doue a zello ouz al lod braz a draou a roin, ha pa ginnigin va roue da Zoue, an Uhelmeurbed, e tegemero anezo.

12. Na ra ket a hoap euz a eun den a zo glaharet e ene : rag eun Doue 'zo hag a wel pep tra, pehini a uvela hag a uhela.

13. Arabad eo dit poania evid lavaroud gevier e-eneb da vreur : na ra ket ivez kement-se a-eneb da vignon.

14. Na lavar gaou ebed : rag boaz ar gevier a zo fall.

15. Na lavar ket kalz a draou e strollad ar re goz, ha na adlavar ket ger da bedenn.

16. N'az-pezh ket a gas ouz al labouriou tenn, nag ouz labour an douar a zo bet krouet gand an Uhelmeurbed.

17. N'en em laka ket e niver an dud direiz.

18. Az-pezh koun euz a vuaneged Doue ; rag ne zaleo ket.

19. Uvela kalz da spered ; rag veñjañs kig ar fallagr eo an tan hag ar preñved.

20. Na ra ket fall e-keñver da vignon, o veza ma tale rei arhant dit, ha na zispriz ket evid aour, da vreur a garez kalz.

21. Na bella ket diouz ar wreg fur ha mad a zo degouezet dit e doujañs an Aotrou : rag gras he dalh a zo dreist an aour.

22. Na wall aoz ket ar servijer a labour gand fealded, nag ar gobraer a ro e vuhez evidout.

23. Ra na vezo ket dit evel da ene ar servijer en-deus skiant ; na zinah ket ar frankiz dezañ, ha n'hel lez ket da goueza en dienez.

24. Ha loened eh-eus-te ? Evesa anezo : ha mar dint talvouduz dit, ra chomint bepred ganez.

25. Ha mibien eh-eus-te ? Desk anezo, ha laka i da blega adaleg o bugaleerez.

26. Ha merhed eh-eus-te ? Mir o horv, ha na ziskouez ket dezo eun dremm laouen.

27. Dimez da verh, hag ez-pezo greet eur gefridi vraz, ha ro hi da eun ozah a skiant.

28. Ma eh-eus eur wreg hervez da galon, na zilez ket anezi : ha na laka ket da fiziañs en hini a zo kasauz.

29. Enor da dad a-greiz da galon, ha na ankounac'ha ket keinvanou da vamm.

30. Az-pezh koun penaoz na vijes ket ganet hebzo : ha gra evito, evel m'o-deus greet evidout.

31. Douj an Aotrou a-greiz da ene, hag az-pezh azaouez evid e veleien.

32. Kar gand da oll nerz an hini en-deus da grouet ; ha na zilez ket e vinistred.

33. Enor Doue a-greiz da ene, hag az-pezh azaouez evid ar veleien ; hag en em hlan gand da zivreh.

34. Ro dezo o lod euz ar henta frouez hag euz an ostivou glanuz ; evel ma eo bet gourhemennet dit : hag en em hlan gand nebeud euz da leziregez.

35. Kinnig d'an Aotrou diskoaz ar viktimou, ha sakrifisou ar zantelidigez, ha preveudiou an traou santel.

36. Astenn da zorn d'ar paour, evid ma vezo klok da zakrifisou ha da ginnigou.

37. Hetuz eo al largetez da beb den beo ; n'hen dinah ket ouz ar re varo.

38. Na fall ket da frealzi an hini a zo doaniet, ha gwel gand ar re a wel.

39. Na vez ket dieg evid mond da weloud ar re glañv : rag ganto en em startai er garantez.

40. E kement a ri, az-pezh koun euz da ziwez, ha ne behi biken.

VIII. Pennad.

Selaouit ar re goz. Na hegit ket ar re fall.

1. Na vreuta ket ouz eun den galloudeg, gand aon na gouezjes dindan e zorn.

2. Na rendael ket ouz eun den pinvidig, gand aon na raje eur breud dit :

3. Rag an aour hag an arhant o-deus kollet meur a hini, hag e troont hag ez eont beteg kalon ar roueed.

4. Na vreuta ket ouz eun teodeg, ha na laka ket a geuneud en e dan.

5. Na zarempred ket eun den diouizieg, gand aon na wallgomzje diwar-benn da ouenn.

6. Na zispriz ket eun den a bella diouz ar pehed, ha na ra ket a rebech dezañ : az-pezh koun penaoz ez om oll dindan ar hastiz.

7. Na zispriz ket eun den en e gozni : rag ar re a gosa a zo bet evel dom.

8. N'en em laouena ket euz a varo da enebour, pa ouzout penaoz e varvim oll, ha ne garfem ket beza eun abeg a levenez.

9. Na zispriz ket lavariou ar re goz pere a zo fur, hogen komz euz o helennou.

10. Rag ganto e teski ar furnez, ha kelennadurez ar poell, hag an doare da zervija ar re vraz hep striv.

11. N'ez eet ket e-biou dit lavariou ar re goz ; rag o desket o-deus gand o zadou ;

12. Rag ganto e teski ar poell, ha da responta e pred.

13. Na laka ket da gregi glaou ar beherien ouz o zamalloud, gand aon na ves devet gand tan o fehejou.

14. N'en em laka ket a-eneb ouz eun den heskiner, gand aon na zavje evel eur spier ouz da henou.

15. Na ro ket war gampi da eun den galloudekoh egedout : ma eh-eus roet war gampi, dalh hen evid kollet.

16. Na greta ket en tu all d'az nerz : ma eh-eus kreteet, e vezo red dit disteurel.

17. Na varn ket a-eneb ar barner : rag eñ a varn hervez ar reiz.

18. N'az a ket en hent gand eun den rog, gand aon an zistaolje e zrougou warnout : rag eñ a yelo hervez e youl, ha te a vezo kollet gantañ dre e follentez.

19. N'en em rendael ket gand eun den buaneg, ha n'az a ket en distro gand eun den rog : rag evel netra eo dezañ skuilla ar gwad, hag el leh ne vezo ket a skoazell dit, e vrevo ahanout.

20. N'az pezh ket a guzul gand tud diboell : rag ne gavont mad nemed ar pezh a blij dezo.

21. Na ra ket a guzul dirag eun diavêziad : rag ne ouzout ket petra a hano.

22. Na ziskouez ket da galon da beb den : gand aon na ve gaou e garantez, ha na wall-gomzje diwar da benn.

IX. Pennad.

Renadur e-keñver ar merhed. Gwell eo ar vignoned koz eged ar re nevez.

1. Na ziskouez ket da galon da beb den : gand aon na ve gaou e garantez, ha na wall-gomzje diwar da benn.

2. Na ro d'ar wreg a halloud war da spered, gand aon na'z aje en da veli, ha na vijes mezekaet.

3. Na zell ket ouz eur wreg skañv-benn ; gand aon na gouejes en he lindagou.

4. Na zarempred ket eun driperez ha na zelaou ket anezi ; gand aon na vijes kollet gand nerz he breou.

5. Na zell ket ouz eur plah yaouank, gand aon na vijes touellet gand he haerded.

6. Na ro e neb doare da galon d'ar plahed fall ; gand aon n'en em gollfes, te ha da vadou.

7. Na zell ket a bep tu er ruou, ha na gantre ket el leuriou-kêr.

8. Distro da zaoulagad diouz eur wreg kinklet, ha na zell ket ouz eur wreg a-ziavêz.

9. En abeg da hened ar wreg eo⁴⁰⁷ bet kollet meur a hini : rag dre ze eo e krog ar gwall-youl evel eun tan.

10. Kement plah fall a zo evel teil a vaher en hent.

11. Meur a hini dre ma'z int bet saouzanet gand kened ar wreg a ziavêz, a zo bet distalet gand Doue ; rag e lavar a zev evel eun tan.

12. Na azez nepred e-kichenn gwreg eun all, na hourvez ket ganti war da ilin :

13. Ha na striv ket ganti oh eva gwin, gand aon na zinaoufe da galon etrezeg enni, ha na gouezjes er holl gand da garantez.

14. Na zilez ket ar mignon koz : rag ar mignon nevez ne vezo ket heñvel outañ.

15. Gwin nevez eo ar mignon nevez : kosaad a ray, ha neuze hen evi gand dudi.

16. Na hoanta gloar na madou ar peher ; rag ne ouzout ket petra e vezo e zismantr.

17. Na hrata ket diboell ar re zireiz ; gouez penaoz an den direiz a vezo dihétuz da Zoue beteg ar bez.

18. En em zalh pell diouz an hini en-deus ar galloud da laza, ha n'az-pezo ket a aon rag ar maro ;

19. Ha mar tostaez outañ, na ra netra a amzere, gand aon na dennje da vuhez diganez.

20. Gouez penaoz eo red mervel ; penaoz e kerzez e-kreiz ar spiou, hag e valeez war armou ar re rehuz.

⁴⁰⁷ eo : zo, ez eus.

21. Laka evez ouz ar re a zo tost dit, ha darempred ar re fur hag ar re boelleg.
22. Ped da zebri ganez tud reiz, ha laka da hloar e doujañs Doue.
23. Hag az-pezh en da spered mennoz Doue, ha ra vezo da oll lavariou gourhemennou an Uhel-meurbed.
24. Ar vicherourien a vezo meulet evid labour o daouarn, ha priñs ar bobl evid furnez e lavariou, hag ar re goz evid skiant o geriou.
25. Al labenner a vezo euzuz en e gêr : hag an den dievez en e lavar a vezo kasaet.

X. Pennad.

Heveleb ar roue, heveleb ar poblou. Neb a zouj Doue a vezo enoret.

1. Ar barner fur a varno e bobl gand furnez, ha renadur eun den a skiant a vezo stard.
2. Heveleb barner ar bobl, heveleb e vinistred : heveleb rener kêr, heveleb ar re a chom enni.
3. Ar roue diskiant a gollo e bobl : hag ar hêriou en em dudo gand skiant o renerien.
4. E dorn Doue ema galloud an douar : hag eñ eo a lakay da zewel warnezañ en e amzer eur rener evel ma vezo red.
5. E dorn Doue ema eurvad an den : hag eñ eo a lakay war penn an den gouizieg an enor a zo dleet dezañ.
6. Ankounac'ha oll wallou da nesa, ha na ra netra gand froudenn.
7. Kasauz eo ar rogentez dirag Doue ha dirag an dud : hag argaruz eo oll fallagriez ar broadou.
8. Eur rouantelez a zo dezouget euz a eur bobl da eun all, en abeg d'an direistedou, ha d'an daelou, ha d'ar froudennou, ha d'an oll douellerezou.
9. N'eus netra argarzusoh eged eun den perverz. Perag e teu da stambouha an douar hag al ludu ?
10. Neus netra gwasoh eged an hini a gar an arhant ; rag eñ a werzje e ene : o veza ma tistaol ez-veo e vouzellou e-unan.
11. Kement galloud a bad nebeud. Eur hleñved hir a skuiz al louzaouer.
12. Al louzaouer a droh ar hleñved evid e verraad : evel-se ar roue a zo hirio, ha warhoaz e varvo.
13. Pa vezo maro an den, en-devezo da zegouez an naered, hag al loened, hag ar preñved.
14. Derou rogentez an den eo pellaad diouz Doue :
15. Hag e galon en em denn diouz an hini en-deus e hreet : rag derou an oll behejou eo ar rogentez ; neb en em stago outi, a vezo leun a valloziou, hag a gavo e goll enni.
16. Rag se en-deuz an Aotrou goloet a vez strolladou an dud fall, hag en-deus o dismantret da viken.
17. Troniou ar briñsed rog en-deus diskaret Doue ; hag en-desu lakaet da azeza warnezo priñsed kuñv en o leh.
18. Doue en-deus dizehet gwriziou ar broadou rog, hag en-deus plantet ar re uvel anezo.

19. Dismantret en-deus an Aotrou douarou ar broadou rog, o diskaret en-deus betek an diazez.

20. Lod anezo en-deus lakaet da zizeha, hag en-deus o haset da netra, hag en-deus lamet an eñvor anezo diwar an douar.

21. Kollet en-deus Doue eñvor ar re rog, hag en-deus miret eñvor ar re uvel a spered.

22. N'eo ket bet krouet ar rogentez gand ar wazed, nag ar vuaneged gand reiz ar merhed.

23. Gouenn ar re a zouj Doue a vezo enoret : hogen gouenn ar re a zilez gourhemennou Doue a vezo mezekaet.

24. Neb a ren e vreudeur a vezo enoret en o hreiz : hag ar re a zouj an Aotrou a vezo hetuz dirag e zaoulagad.

25. Gloar ar re binvidig, hag ar re enoret, hag ar re baour, eo doujañs Doue.

26. Na zispriz ket an den reiz hag eñ paour, ha na enor ket an den peher hag eñ pinvidig.

27. An den braz, ar barner, hag an den galloudeg a zo enoret : hogen n'int ket brasoh eged an hini a zouj Doue.

28. An dud frank a blego dindan ar servijer en-deus skiant : hag an den poelleg ha desket ne grozo ket pa vezo tamallet, hag an den diskiant ne vezo ket enoret.

29. N'en em uhella ket en da oberiou, ha n'en em ro ket d'an diegi e amzer an anken.

30. Gwell eo an hini a labour hag en-deus pep tra, eged an hini a fouge hag a ziuver bara.

31. Va mab, mir da ene er guñvez, ha ro dezañ an enor hervez e zellid.

32. Piou a zidamallo an hini a beh a-eneb e ene ? Ha piou a enoro an hini a zizenor e ene ?

33. Ar paour a gav e hloar er reiz hag e doujañs Doue : tud 'zo hag a zo enoret evid o madou braz.

34. Neb a gav e hloar er baourentez, pegement he havje c'hoaz gwelloh er binvidigez ? Hogen an hini a zo enoret evid e vadou, lakaet evez na zeuje da veza paour.

XI. Pennad.

Ne dleer ket barna an dud diouz o doare. A-berz Doue e teu ar mad hag an droug.

1. Furnez an den uvel e lakay da zevel e benn, ha da azeza e-kreiz ar re vraz.

2. Na veul ket eun den evid e zoare-mad, ha na zispriz ket eun all evid e zoare dister.

3. Bihan eo ar wenanenn e-touez al loened a nij, hag ar c'hweka eo he frouez.

4. Na fouge ket gand da zillad kaer, ha n'en em uhela ket e deiz da enor : rag n'eus nemed oberiou an Uhel-meurbed a gement a ve meulet ha meuleuduz : kuzet ha dizanav eo e oberiou.

5. Meur a vahir a zo bet azezet war an tron, ha tud o-deus douget ar gurunenn, ha ne vije ket bet kredet o-divije betek anezi.

6. Kalz priñsed galloudeg a zo bet gwall wasket, hag ar re o-doa leun a hloar a zo bet kouezet etre daouarn ar re all.

7. Na damall den a-barz m'az-pezo greet eun enklask : ha pa'az-pezo greet eun enklask, kelenn eñ gand reizded.

8. Na respont ket a-barz m'az-pezo selaouet : ha na'z a ket war gomz eun all.

9. Na striv ket diwar-benn an traou ha na zellont ket ouzit : ha na azez ket evid barna gand ar re zroug.

10. Va mab, n'en em ro ket da galz a oberiou : ha mar dout pinvidig, ne vezi ket kuit a wallou ; hogen ma heuliez anezo, n'o zizi ket : ha mar diarbennez anezo, ne dehi ket diouto.

11. Tud 'zo hag a labour, hag a hast en eur boania : hogen o veza ma int fallagr, seul vui ma reont, seul nebeutoh e tastumont.

12. Tud 'zo hag i dinerz, hag ezomm dezo a skoazell, ha displeber, ha paour-braz ;

13. Ha lagad Doue a zell outo gand trugarez, a denn anezo euz o uvelded, hag a zav o fenn : ha kalz ouz o gweloud a zo souezet, hag a veul Doue.

14. Ar mad hag an droug, ar vuhez hag ar maro, ar baourentez hag ar binvidigez a zeu digand Doue.

15. Ar furnez hag ar gelennadurez, ha gouiziegez al lezenn en em gav ivez e Doue. Ar garantez hag ar mad-oberiou a zo c'hoaz ennañ.

16. Ar fazi hag an amhoulou a zo bet krouet kevred gand ar beherien : hag ar re en em veul en droug a gosay en droug.

17. Ar pez a zo roet gand Doue a chom stard en dud reiz, hag ar greskadurez a ra a bad da viken.

18. Tud 'zo hag a binvidika oh espernoud ; hag ar gobr o-deus eo

19. E hellont lavaroud : Kavet em-eus ehan evidon, ha bremañ e tebrin va madou va-unan :

20. Ha ne ouzont ket penaoz ez a an amzer e-biou, e tosta ar maro, e varvint, hag e lezint pep tra da re all.

21. Chom stard en da gevredigez, ha komz bepred anezi, ha kosa en oberiou a zo bet gourhemennet dit.

22. Na chom ket e oberiou ar beherien. Laka da fiziañs e Doue, ha chom en da leh.

23. Rag êz eo da Zoue pinvidikaad ar paour en eun taol.

24. Doue a vennig an den reiz hag a hast e hopraad, hag e ra dezañ dougen frouez e berr amzer.

25. Na lavar ket : Petra a dalv din beza e poan, ha pe vad em-eus-me c'hoaz da heda ?

26. Na lavar ket : Ar pez em-eus a zo a-walh evidon ; penaoz e hellfen-me beza gwasoh ?

27. E deiz ar mad na ankounac'ha ket an droug ; hag e deiz an droug na ankounac'ha ket ar mad.

28. Rag êz eo da Zoue disteurel da bep hini, e deiz e varo, hervez e heñchou.

29. An droug a-vremañ a laka da ankounac'haad dudiu braz, hag e maro an den e vezo dizolo-kaer e oberiou.

30. Na veul den ebed a-barz e varo ; rag anaoud a reer eun den diouz e vugale.

31. Na zegemer ket kement hini en da di : rag kalz spiou a gav an toueller.

32. Rag evel ma teu flaer euz a vouzellou brein, evel ma eo⁴⁰⁸ dedennet eur glujar er roued, hag eur yourh el lindag ; evel-se eo kalon ar re rog, hag ar re a arvest lamm o nesa.

33. Rag spiou a aoz o trei ar mad e droug, hag a laka nammou en oberiou ar re wella.

34. Eun elfenn hepken a laka an tan da gregi, hag eun droidell hepken a laka ar gwad da redeg : hogen ar peher a aoz spiou evid skuilla ar gwad.

35. Laka evez ouz ar gwall zen, rag droug ne ra ken ; gand aon an zegasje ar goaperez warnout da viken.

36. Degemer an diavêziad en da di, hag eñ a ziskaro ahanout er reustl, hag a lakay ahanout er-mêz eus da di da-unan.

XII. Pennad.

Diêz eo anaoud e vignoned diouz e enebourien.

1. Mar grez vad, gouez da biou her gri, hag ar pez a ri a vad a vezo kavet mad.

2. Gra vad d'an den reiz, hag e kavi eur gopr braz, ma n'eo ket digantañ, da vihanna digand an Aotrou.

3. Rag n'eus ket a vad da hedall evid an hini en em ro bepred d'an droug, pe na ra ket an aluzenn : rag an Uhel-meurbed a gasa ar beherien, hag en-deus truez ouz ar re a ra pinijenn.

4. Ro d'an den trugareg, ha na skoazell ket ar peher : Doue a daolo e veñjañs war ar re fallagr ha war ar beherien ; hag e viroud a ra evid deiz e veñjañs.

5. Ro d'an den mad, ha na zegemer ket ar peher.

6. Gra vad d'an den uvel, ha na ro ket d'ar fallagr ; mir na vezo roet bara dezañ, gand aon na zeuje dre ze galloudekoh egedout :

7. Rag daou zroug a gavi en oll vad a ri dezañ : rag an Uhel-meurbed a gasa ar beherien, hag a zizolo e veñjañs war ar re fallagr.

8. Ne anavezer ket ar mignon en amzer vad ; hag an enebour n'en em guz ket er gwall amzer.

9. E amzer vad eun den, e enebourien a zo doaniet ; ha pa ema e gwall amzer, eh anavezer piou eo e vignon.

10. Na laka biken da fiziañs en da enebour : rag e zrougiez a zo evel ar mergl pehini en em stag ouz ar houe vr :

11. Ha petra bennag m'en em uvela, ha ma stou, bez evezieg, hag en em vir dioutañ.

12. N'hel laka ket en da gichenn, ha na ra ket dezañ azeza en tu dehou dit, gand aon na'z aje en da leh, ha na azezje en da gador ; ha na zeujes en diwez da anaoud va geriou, ha da veza kentraouet gand va lavariou.

13. Piou en-devezo truez ouz ar strobinner pa vezo flemmet gand an naer, hag ouz ar re oll a dosta ouz al loened ? Evel-se an hini en em unvan gand an den direiz, en em gav strobet en e behejou.

14. A-hed eun eur⁴⁰⁹ e chomo ganez : hogen mar dinaouez, ne hello mui padoud.

⁴⁰⁸ eo : vez.

⁴⁰⁹ eun eur : eun eurvez.

15. Ar c’hwekder en-deus da enebour war e vuzellou ; hag en e galon e venn aoza spiou dit evid da lakaad da goueza er poull.

16. Ema an daerou e daoulagad da enebour ; ha mar kav an darvoud, n’en em walho ket a wad.

17. Mar deu droug dit, e gavi ar henta eno.

18. Ema an daerou e daoulagad da enebour ; ha war zigarez da skoazella, e klasko d’az lakaad da goueza.

19. Heja a ray e benn, ha stlaka a ray gand e zaouarn, hag o trei e zaoulagad, e lavaro kalz a hevier.

XIII. Pennad.

Red eo karoud Doue hag e nesa.

1. Neb a lakay e zorn war ar peg, a vezo saotret gantañ : hag an hini en em unvano gand eun den rog a gemero ar rogetez.

2. Neb a zarempred brasoh egetañ, a denn eur beh pounner warnezañ. N’en em unvan ket gand eun den pinvidikoh egedout.

3. Pe unvaniez ‘zo etre eur pod-houarn hag eur pod-pri ? Rag pa stokint an eil ouz egile, hemañ a vezo brevet.

4. An den pinvidig en em ren gand direisted, ha c’hoaz e hourdrouz : ar paour a zo bet gwallgaset, hag e tav.

5. Mar grez largenteziou, an den pinvidig a zegemero ahanout : ma n’eh-eus netra, e tilezo ahanout.

6. Ma eh-eus peadra, e talho tinell vad ganez, hag e tizeho ahanout ; ha goude n’en em brederio ket diwar da benn.

7. Mar dout talvouduz dezañ, e ray goap ahanout, e roy ged mad dit en eur hoarzin, e komzo ouzit a zoare mad, hag a lavaro : A betra eh-eus ezomm ?

8. Da lakaad a ray da zebri gantañ ha da rei da zebri dezañ, ken n’en-devezo da zizehet e diou pe e teir gwech : hag en diwez e ray goap ahanout : ha goude-ze e tilezo ahanout, hag eh hejo e benn pa’z kwelo.

9. En em uvela dirag Doue, ha gortoz skoazell e zorn.

10. Laka evez n’en em uvelfes evel eur foll, ha na vijes touellet.

11. N’en em uvela ket en da furnez, gand aon n’en em uvelfes er follentez, ha na vijes touellet.

12. Mar dout galvet gand eun den braz, pella ; rag dre ze e halvo kentoh ahanout.

13. Na zarempred ket anezañ re aliez, gand aon na zeuje da erezi ouzit : ha na bella ket a-grenn dioutañ, gand aon na vijes ankounac’haet gantañ.

14. Na gomz ket pell gantañ evel pa vijes par dezañ : ha na gred ket d’e lavariou hir ; rag da arnodi a ray ouz da lakaad da gomza kalz ; hag en eur hoarzin e ray goulennou dit⁴¹⁰ diwar-benn ar pezh a dleez da guza.

15. E galon didruez a viro da heriou ; ha na esperno nag an drougiez nag ar chadennoù.

16. Laka evez ouzit, ha selaou piz ar pezh a lavaro dit : rag war ribl al lonk e valeez.

⁴¹⁰ dit : diganit.

17. Pa glevi e heriou, sell i evel eun huñvre, hag e vezi dihun.
18. Kar Doue ‘hed da oll vuhez, ha ped eñ evid da zilvidigez.
19. Peb loen a gar e bar : evel-se peb den a gar e nesa.
20. Pep kig en em unvan gand an hini a zo heñvel outañ ; ha peb den en em unvan gand an hini a zo heñvel outañ.
21. Evel n’em em unvan ket ar bleiz gand an oan, evel-se n’em em unvan ket ar peher gand an den reiz.
22. Pe zarempred en-deus an den santel gand ar hi ? Ha pe unvaniez en-deus eun den pinvidig gand eun den paour ?
23. An azen gouez eo preiz al leon en distro ; evel-se ar re baour a zo preiz ar re binvidig.
24. Evel ma eo argaruz an uvelded d’an den rog, evel-se eo argaruz an den paour d’an den pinvidig.
25. Mar deo keflukset an den pinvidig, e vezo harpet gand e vignoned ; hogen mar deu da goueza an den paour, e vezo bountet gand e vignoned.
26. Mar deo bet touellet an den pinvidig, e teuy kalz d’e skoazella ; mar komz gand rogentez, e vezo didamallet.
27. Mar deo bet touellet an den paour, e teuer c’hoaz d’e damalloud : mar komz gand furnez, ne zelaouer ket anezañ.
28. Mar komz an den pinvidig, an oll a dav, hag e heriou a zo douget beteg ar hoabr.
29. Mar komz ar paour, e leverer : Piou eo hemañ ? Ha mar deu da goueza, e tiskarer anezañ.
30. Ar madou a zo mad evid an hini dibehed e goustiañs ; hag ar baourentez a zo gwall fall evid ar fallagr a zo ar gourdrouz en e henou.
31. Kalon an den a dro e zremm, pe evid ar mad, pe evid an droug.
32. Poan ha labour az-pezo o kavoud eun dremm vad, hag a vezo eun arouez euz a eur galon vad.

XIV. Pennad.

Mad eo lakaad e goun er maro.

1. Eüruz eo an den pehini n’eo ket kouezet gand ar geriou euz e henou, ha pehini n’eo ket broudet gand doan ar pehed.
2. Eüruz eo an hini e kalon pehini n’ema ket an doan, ha n’en-deus ket kollet e hed.
3. Didalvez eo an danvez d’an den pervez ha piz : petra a dalv an aour d’an den erezuz ?
4. Nab a zastum madou digand reisted⁴¹¹, diwar-goust e vuhez, a zastum evid re all ; hag eun all a vevezo e vadou en dirollou.
5. Neb a zo droug evitañ e-unan, evid piou e vezo-eñ mad ? Ne berhenno ket e vadou.
6. N’eus netra gwasoh eged an hini a erez e vividigez e-unan ; an distaol eo euz e zrougiez.

⁴¹¹ reisted : distagadur ar ger “reizded”.

7. Mar gra vad, her gra heb e houzoud, hag a-eneb d'e youl : hag en diwez e tiskouezzo e zrougiez.

8. Lagad an den erezuz a zo droug : distrei a ra e benn, hag e tispriz e ene.

9. Lagad an den perverz ne hell ket kaoud e walh en e fallagriez : n'en-devezo e walh nemed p'en-devezo dizehet ha losket e ene.

10. Ar gwall lagad a dro ouz an droug : ne zebro ket e walh a vara, hogen naoneg ha trist e vezo ouz e daol.

11. Va mab, ma eh-eus peadra, gra vad dit da-unan, ha kinnig da Zoue traou mad.

12. Az-pezh koun penaoz ne zaleo ket ar maro, ha penaoz eo anad ez i er bez ; rag evid oll dud ar bed eo ar varnedigez a lavar e tleer mervel.

13. Gra vad d'az mignon a-barz e varo, ha ro an aluzenn d'ar paour hervez da halloud.

14. Na ziuver ket gounid an deiz mad, ha na zilez lodenn ebed euz ar vad a zeu dit.

15. Ha n'eo ket da re all e lezi frouez da boan ha da labour evid o ranna etrezo ?

16. Ro, ha kemer evito, ha santela da ene.

17. Gra oberiou reiz a-barz ma varvi ; rag n'eo ket red kaoud boued er bez.

18. Pep kig a weñvo evel ar geot, hag evel an deliou a gresk war ar gwez glaz.

19. Lod a zav, lod all a gouez ; evel-se er ouenn a gig hag a wad-se, lod a varv, ha lod all a zo ganet.

20. Peb ober breinuz a yelo da netra hag an hini en-devezo e hreet, a yelo gantañ.

21. Ha peb ober dilennet a vezo enoret : hag an hini en-devezo e hreet, a vezo enoret ennañ.

22. Eüruz eo an den a chom er furnez, hag a laka e breder er reizded, hag a venn bepred e rag-gwel Doue ;

23. Pehini a goun en e heñchou en e galon, hag a boell e oberiou kuzet ; pehini a ya war-lerh ar furnez, evel eun enklasker, hag a vale en e raventchou :

24. Pehini a zell dre he frenestou hag a zelaou ouz he dor ;

25. Pehini a arzao e-kichenn he zi ; hag o sanko eur peul en he mogeriou, a zav eul lojig en he hichenn, e pehini en em viro e vadou da viken en eun ehan braz.

26. Lakaad a ray e vibien dindan he zoenn, hag eñ e-unan a chomo dindan he skourrou.

27. Eun disheol a gavo dindan he zoenn, hag eun ehan en he gloar.

XV. Pennad.

Digand Doue e teu ar furnez. Ar pehed ne zeu ket dioutañ.

Dieub eo bet krouet an den gantañ.

1. Neb a zouj Doue a ray ar mad ; ha neb a zo stard er reizded en-devezo ar furnez ;

2. Hag hi a zeu d'e ziambrouga evel eur vamm leun a enor : hag hi a zegemero anezañ evel ma tegemer eur plah-yaouank he fried.

3. E vaga a ray gand bara e vuhez hag a furnez ; rei a ray da eva dezañ dour ar furnez hag ar zilvidigez : en em starda a ray ennañ, hag hel lakaay digeflusk.

4. E zerhel a ray, ha ne vezo ket mezekaet : e zevel a ray e-touez e gerent-nes.
5. Digeri a ray e henou e-kreiz ar strollad, hag e leunio anezañ gand ar spered a furnez hag a boell ; hag e wisko anezañ gand eur zae a hloar.
6. Eun teñzor a joaiusted hag a levez a zastumo dezañ, hag e roy dezañ da zegouez eun ano peurbaduz.
7. An dud diskiant ne zalhint ket anezi, hag an dud a skiant a ziambrougo anezi ; an dud diskiant ne welint ket anezi ; rag pell en em zalh diouz ar rogentez hag an touellerez.
8. An dud gaouiad n'o-devezo ket a eñvor anezi : hogen an dud wirion en em gavo ganti, hag e kerzint gand eurvad beteg gweled Doue.
9. N'eo ket ker ar veuleudi e genou ar peher :
10. Rag digand Doue e teu ar furnez : meuleudi Doue a ya kevred gand ar furnez, leunia a ra genou an den feal ; an Aotrou eo he ro dezañ.
11. Na lavar ket : Doue a zo abeg n'em-eus hi ket ⁴¹²; rag ne ra ket ar pezh a gasa.
12. Na lavar ket : Eñ eo en-deus va zouellet : rag an dud fallagr n'int ket red dezañ.
13. Peb argarziged ha peb diroll a gasa an Aotrou, ha kement-se ne vezo ket karet gand ar re a zouj anezañ.
14. Doue adaleg ar penn kenta en-deus krouet an den, hag en-deus e lezet e dorn e guzul e-unan.
15. Ouspenn en-deus roet dezañ e hourhemennou hag e gelennoù.
16. Mar fell dit miroud e hourhemennou, ha kenderhel eur feiz vad, e virint ahanout.
17. Lakaet en-deus dirazout an dour hag an tan : laka da zorn en tu ma kiri.
18. Dirag an den ema ar vuhez hag ar maro, ar mad hag an droug : ar pezh en-devezo kavet mad a vezo roet dezañ.
19. Rag braz eo furnez Doue, ha kreñv e halloud ; an dud oll a ouel heb ehan.
20. Daoulagad an Aotrou a zo war ar re a zouj anezañ, hag eñ a anavez oll oberiou an den.
21. N'en-deus gourhemennet da zen ober droug, ha n'en-deus roet da zen ar pred da behi :
22. Rag n'eo ket e youl kaoud eul lod braz a vugale displeal ha didalvez.

XVI. Pennad.

*Ne dleer ket bepred en em laouennaad euz al lod braz euz e vugale.
Den ne hell tehoud diouz barnedigez Doue.*

1. N'en em laouena ket o veza ma eh-eus kalz a vugale, mar dint fallagr : na laka ket da zudi enno, ma n'o-deus ket doujañs Doue.
2. N'en em harp ket war o buhez, ha na denn ket a fouge euz o labouriou.
3. Rag eur mab hepken hag a zouj Doue a zo gwelloc'h eged mil mab fallagr.
4. Ha talvoudusoh eo mervel heb bugel, eged lezel war e lerh bugale fallagr.
5. Gand eun den a skiant e vezo poblet eur gêr oll, hag eur vro leun a dud fallagr a zeuio da veza diboblet.

⁴¹² n'em-eus hi ket : n'em-eus ket anezi.

6. Meur a dra en doare-ze en-deus gwelet va lagad, ha traou dreist c'hoaz he-deus klevet va skouarn.

7. An tan a grogo e strollad ar beherien, hag en eur vroad diskredig e savo ar froudenn.

8. N'eo ket bet distaolet o fehejou d'al langouineien gwechall ; dispennet int bet, o veza m'o-doa lakaet o fiziañs en o nerz o-unan.

9. N'en-deus ket espernet Doue ar gêr e pehini e oa en em dennet Lot ; an dud anezi a zo bet argarzet gantañ, en abeg da rogentez o lavar.

10. N'en-deus ket bet a druez outo ; an oll vroad en-deus kollet, o veza ma oa savet he rogentez en he fehejou.

11. Kollet en-deus ivez ar c'hweh-kant mil den war droad, pere a zispahas kevred e kaleder o halon : ha c'hoaz n'en-divije ket distaolet da unan hepken, ma vije bet kilpenneg evel ar re all.

12. Rag an drugarez hag ar vuanegez a zo gantañ. Galloudeg eo evid distaoli ar pehejou, hag ivez evid skuilla e vuanegez.

13. Hervez e drugarez eo e gastiz, hag an den a varn⁴¹³ hervez e oberiou.

14. Ar peher a gendalh en droug ne deho ket dioutañ, hag habaskded an den trugarez ne zaleo ket kaoud e hobr.

15. Pep trugarez a roy he leh da bep hini hervez dellid e oberiou, hag hervez e boell a-hed e birhirinded.

16. Na lavar ket : Kuzet e vezin dirag Doue, hag euz an neh piou en-devezo koun ahanon ?

17. E-kreiz eur bobl ker braz ne vezin ket anavezet ; rag petra eo va ene e-touez eun niver ker braz a grouadurioù ?

18. Setu an neñv, ha neñv an neñvou, al lonk, hag an douar oll, hag ar pez a zo enno, a greno dirazañ.

19. Ar menezioù ivez, hag ar hrehiennou, ha diazezou an douar, a horello gand spont, pa zello Doue outo.

20. Hag e-kreiz ar re-ze oll e ouel ar galon diskiant ; hag eñ a anavez diabarz an oll galonou.

21. Piou a anavez heñchou Doue, hag abeg an arneou, n'en-deus biskoaz gwelet an den.

22. Kalz euz e oberiou a zo kuzet : rag piou a hellfe rei da anaoud oberiou e reizded ? Pe piou a hellfe o gouzañvi ? Ar varnedigez a zo pell diouz hiniennou, hogen enklask an oll a hoarvezo en deiz diweza.

23. Neb a zo dinerz e galon, en-deus mennoziou gwan ; ha neb a zo diboell hag hedro, en-deus mennoziou foll.

24. Va mab, selaou ahanon, ha desk reiz ar spered, ha bez evezieg a galon ouz da lavariou.

25. Rei a rin dit kelennou reiz, hag e tanevellin dit reoliou tenn ar furnez : bez evezieg a galon ouz va lavariou, hag e roin da anaoud dit gand eur spered reiz, ar burzudou en-deus diskouezet Doue adaleg ar penn kenta en e oberiou, hag e likiin ahanout da anaoud ar wirionez.

26. Doue en-deus da genta greet e oberiou er furnez ; rannet en-deus kevrennou ar bed kerkent ha m'en-deus o hrouet ; ar re genta en-deus lakaet evid mond en o reiz.

⁴¹³ hag an den a varn : hag e varn an den.

27. O hinklet en-deus da viken ; heb ezomm, hep skuiza, n'o-deus ket ehanet da valea.

28. Biskoaz hini anezo n'en-deus enkrezet eun all, ha biken ne enkrezo.

29. Na vez ket diskredig da her an Aotrou.

30. Goude-ze Doue en-deus sellet ouz an douar, hag en-deus e leuniet gand e vadou.

31. E holoet en-deus gand an oll anevaled a zo war e horre, pere a zistroy en douar a behini int bet tennet.

XVII. Pennad.

Doue en-deus greet an den diouz e skeudenn e-unan. Peger braz eo trugarez Doue.

1. Doue en-deus krouet an den gand douar, hag en-deus e hreet diouz e skeudenn.

2. E lakaet en-deus da zistrei adarre ennañ ; e wisket en-deus a nerz hervez e aoz.

3. Merket en-deus dezañ an amzer hag an niver euz e zeizioù ; roet en-deus dezañ ar galloud war kement a zo war an douar.

4. E lakaet en-deus da veza doujet gand kement kig a zo, hag en-deus roet dezañ an aotrouniez war al loened ha war an evned.

5. Krouet en-deus dezañ anezañ e-unan eur skoazell heñvel outañ : aozet en-deus dezo ar huzul, eun teod, daoulagad, diskouarn, hag eur galon evid menna : o leuniet en-deus gand kelenn ar poell.

6. Krouet en-deus enno gouiziegez ar spered, leuniet en-deus o halon a skiant : diskouezet en-deus dezo ar madou hag an droug.

7. E lagad en-deus lakaet war o halonou, evid diskoueza dezo brazder e oberiou.

8. Evid ma veuljent e ano santel ; ma enorjent anezañ en abeg d'e vurzudou, ha ma tanevelljent brazder e oberiou.

9. Ar gelennadurez en-deus roet dezo ; hag al lezenn a vuhez en-deus roet e degouez dezo.

10. Eur gevredigez peurbaduz en-deus greet ganto ; e reizded hag e varnedigezioù en-deus diskouezet dezo.

11. O daoulagad o-deus gwelet burzudou e hloar, o diskouarn o-deus klevet e vouez enoruz, pa en-deus lavaret dezo : Tehit diouz pep fallagriez.

12. Da bep hini anezo en-deus gourhemennet prederia e nesa.

13. O heñchou a zo bepred dirazañ, n'int ket kuzet ouz e zaoulagad.

14. Eur priñs en-deus lakaet evid rena peb broad :

15. Hag Izrael a zo bet, en eun doare anad, lodenn Doue.

16. O oll oberiou a zo bet dirazañ ker sklêr hag an heol : hag e zaoulagad a zell bepred ouz o heñchou.

17. N'eo ket bet teñvallaet e lezennou gand o fallagriez ; ha Doue a wel o heñchou.

18. Aluzenn an den a zo evel eur ziell dirag Doue ; hag eñ a viro trugarez an den, evel mab al lagad.

19. Ha goude-ze e savo, hag e tistaolo da bep hini e hobr diouz e zellid, hag e strinko ar gwall dud beteg goueled an douar.

20. Hogen d'ar re a ra pinijenn e ro hent ar reizded ; startaad a ra ar re a zo dare da zihabaskaad ; hag e tegas dezo ar wirionez dre zegouez.

21. Distro ouz an Aotrou, ha dilez da behejou.

22. Kinnig da bedenn d'an Aotrou, ha pella diouz ar mên fazi.

23. Distro etrezeg an Aotrou, ha pella diouz an direizded ; hag argarz ar pezh a gasa Doue ;

24. Anavez ar reizded ha bardedigeziou Doue, ha chom stard en da stad, ha ped an Doue Uhel-meurbed.

25. Kee da gemeroud lod euz an amzer zantel, gand ar re a vev hag a veul Doue.

26. Na chom ket e fazi ar re fallagr ; meul Doue a-barz ar maro ; ar veuleudigez n'eo ket evid ar re varo, pere a zo evel netra.

27. Meul Doue endra ma out beo, meul eñ endra ma out beo ha yah ; meul Doue, hag en em veul en e drugarezou.

28. Peger braz eo trugarez an Aotrou, hag e zistaol e-keñver ar re a zistro outañ !

29. Rag pep tra ne hell ket en em gavoud en dud, o veza n'eo ket peurbaduz mab an den, hag e lakaont o dudi er rogentez hag en drougiez.

30. Petra a zo lugernusoh eged an heol ? Hag eñ koulskoude a gouez e fallaenn. Pe Petra a zo gwasoh eged ar pezh a venn ar hig hag ar gwad ? Ha kement-se a vezo kastizet.

31. An heol a arvest ar pezh a zo an uhella en neñv : hag an dud oll n'int nemed douar ha ludu.

XVIII. Pennad.

Red eo beza trugareg e-keñver ar re all. Penaoz e tleer pedi.

1. An hini a vev a beb amzer en-deus krouet pep tra kevred. Doue hepken a vezo kavet reiz ; ar roue didrehuz eo hag a bado da viken.

2. Piou a hello danevella e oberiou ?

3. Piou a hello enklaskoud piz e vurzudou ?

4. Piou a roy da anaoud ollhalloud e veurded ? Piou a glasko danevella e drugarez ?

5. Na heller na bihannaad, na kreski, na poella burzudou Doue.

6. Pa vezo deuet an den da benn, e kavo dezañ beza eun derou : ha pa ehano e vezo ar souez.

7. Petra eo an den, a be dalvoudegez e hell beza da Zoue ? Pe vad, pe zroug a hell dond dioutañ ?

8. An niver euz a zeiziou an den, evid ar muia, n'eo nemed euz a gant vloaz : an nebeud bloaveziou-ze, e-skoaz ar beurbadelez, n'eo nemed evel eur banne euz a zour ar mor, pe evel eun drêzenn.

9. Dre ze eo Doue habask en o heñver, hag e skuill e drugarez warnezo.

10. Gweloud a ra rogentez o halon, pehini a zo droug ; anaoud a ra diroll o spered, pehini a zo fallagr.

11. Rag se en-deus o leuniet gand e guñvez, hag en-deus diskouezet dezo hent ar reizded.

12. Trugarez an den en em skuill war e nesa ; hogen trugarez Doue en em skuill war an oll gig.

13. O veza ma en-deus an drugarez, e tesk hag e kelenn, evel ma ra eur mesaer e-keñver e zeñved.

14. Truez en-deus ouz an hini a zegemer kelenn e drugarez, hag a hast da zeveni e hourhemennou.

15. Va mab, na vesk ket ar rebech gand ar mad a rez, ha na laka ket gand da roou geriou trist ha dicheg.

16. Ar gliz hag-eñ ne rafresk ket ar wrez ? Evel-se eur ger mad a zo gwelloh eged ar ro.

17. C’hwekder ar geriou ha n’eo ket dreist ar ro e-unan ? Hogen an eil hag egile en em gav en den reiz.

18. An den diskiant a ra rebechou c’hwero : ha ro an den digelenn a zizeh an daoulagad.

19. A-barz ma varni, aoz ar reizded, hag a-barz ma komzi, desk.

20. A-barz ar hleñved, kemer al louzou, hag a-barz ar varn, sell piz ouzit da-unan, hag e kavi trugarez dirag Doue.

21. A-barz ar hleñved, en em uvel, hag e amzer ar hleñved, diskouez da vuhezegez.

22. N’en em vir ket da bedi bepred, ha na ehan ket da vond donnoh er reizded beteg ar maro : rag gobr Doue a chom da viken.

23. A-barz ar bedenn aoz da ene ; ha na vez ket evel eun den a dempt Doue.

24. Az-pezh koun euz a vuanegez an deiz diweza, hag euz an amzer e pehini Doue a zistaolo da bep hini hervez e oberiou.

25. Az-pezh koun euz ar baourentez, e amzer ar puillder, hag euz a ezommou ar baourentez e deiz ar binvidigez.

26. Euz ar mintin beteg ar pardaez e tro an amzer, ha kement-se a hoarvez en eun taol dirag Doue.

27. An den fur a vezo bepred en aon, hag e deizioù ar gwallou en em viro diouz an diegi.

28. Peb den gwevn a anavez ar furnez, hag a enor an hini en-deus he havet.

29. An dud a skiant a ziskouez o furnez en o lavariou : anaoud a reont ar wirionez hag ar reizded, hag e sevenont al lavariou-troet hag ar barnedigezioù.

30. Na’z a ket war-lerh da wall-youlou, ha distro diouz da youl da-unan.

31. Mar bastez da ene en e wall-youlou, e lakay ahanout da veza goapaet gand da enebourien.

32. N’en em blij ket er strolladou braz nag er strolladou bihan ; rag kalz a behejou a reer enno.

33. N’en em laka ket er baourentez, oh ampresta war gampi, pa n’eh-eus netra en da yalh ; rag evel-se e kolli an doare da veva.

XIX. Pennad.

Penaoz eh anavezet ar wir furnez hag ar furnez haou.

1. Ar micherour mezvier ne binvidikay ket : neb a zispriiz an traou dister, a gouezo nebeud ha nebeud.

2. Ar gwin hag ar merhed a laka da goueza beteg ar re furra, hag a zegas ar vezegez war ar re fur.

3. Neb a zarempredo ar plahed fall a zeuy da veza fallagr : da voued e teuy d'ar vreinaurez ha d'ar preñved ; eur skwer vraz a vezo greet anezañ, hag e ene a vezo tennet euz a niver ar re veo.

4. Neb a zo kredig a zo skañv a galon ; hag eñ a vezo displeberet : hag ouspenn e vezo sellet evel an hini a beh a-eneb e ene.

5. Neb a gar ar fallagriez, a vezo mezekaet ; ha neb a gasa ar helennou, e vezo krennet e vuhez : hag an hini a gas al labennerez, a vougo an drougiez.

6. Neb a beh a-eneb e ene en-devezo keuz : ha neb en em laouena en e zrougiez, a vezo mezekaet.

7. Na adlavar ket eur ger droug ha dicheg, ha ne vezi ket displeberet.

8. Na lavar ket da vennoz na d'az mignon na d'az enebour ; ha ma eh-eus greet droug, n'hen diskuill ket.

9. Rag eñ a zelaouo ahanout, hag a arvesto ahanout, hag oh ober neuz da zidamalloud an droug, e kasaay ahanout, hag evel-se en em ziskouezo dit bepred.

10. Ha klevet eh-eus-te eur ger a-eneb da nesa ? ra varvo ennout, ha laka evez na zispenn ket ahanout.

11. An den diskiant a han eur ger, evel eur wreg a zo e poan-vugale.

12. Eur zaez sanket e kig ar vorzed, evel-se eo ar ger e kalon eun den diskiant.

13. Tamall da vignon, gand aon n'en-defe ket poellet ha na lavarfe : N'em-eus ket greet : pe ma en-deus greet, evid na ray mui hiviziken.

14. Tamall da nesa gand aon n'en-defe ket lavaret ; pe ma en-deus lavaret, evid na lavaro mui.

15. Tamall da vignon ; rag aliez e tamaller e gaou.

16. Na gred ket kement a lavarar : tud 'zo hag a fazi gand an teod, ha na reont ket gand ar galon.

17. Rag piou eo an hini ha na beh ket gand an teod ? Tamall da nesa a-barz ma krozi anezañ.

18. Ro leh da zoujañs an Uhel-meurbed ; rag doujañs Doue eo ar furnez kenta ; hi eo a zesk douja Doue ; er furnez ema levenidigez al lezenn.

19. An drougiez wenv n'eo ket furnez : ha mennoz ar beherien n'eo ket poell.

20. Eun drougiez 'zo hag a zo argaruz ; hag eun diboell 'zo pehini eo eun diouer a furnez.

21. Gwell eo an den pehini a ziouer ar furnez, ha n'en-deus ket a skiant, hogen a zouj Doue, eged an hini en-deus kalz a skiant, ha na zeven ket lezenn an Uhel-meurbed.

22. Eur weñved a zo hag a zo diarvaruz ; hogen direiz eo.

23. Tud 'zo hag a gomz frêz, hag a lavar ar wirionez. Lod all en em uvela gand drougiez, hag o halon a zo leun a douellerez.

24. Tud 'zo hag a bleg gand eun uvelded vraz : lod all a stou o fenn, hag a ra evel pa n'o-defe ket gwelet ar pezh a feller da guza.

25. Hogen mar deu o dinerzded da viroud outo na behint, mar kavont an darvoud da ober droug, e raint droug.

26. Diouz ar gweled eh anavezer eun den, ha diouz doare e zremm eh anavezer e skiant.

27. Gwisk ar horv, ha c'hoarz an dent, ha tiz an den a ziskouez petra eo.

28. Eun tamall gaou 'zo e buanegez eun den rog ; eur varnedigez 'zo ha na gaver ket e ve reiz : ha neb a dav a zo fur.

XX. Pennad.

Arouez an den diskiant. Eurvad an den fur.

1. Ha n'eo ket gwelloc'h tamalloud an den, ha rei leh dezañ da anzavoud e behed, eged kenderhel e vuaneged outañ !
2. Gwall-youl eur spaz a wallo ar plah-youank.
3. Evel-se e ra an hini a zoug dre redi eur varn direiz.
4. Peger mad eo d'an hini a zo tamallet diskoueza e geuz ! evel-se e tehi diouz ar pehed youl.
5. Tud 'zo hag a dav, hag a gaver fur : ha lod all a zo kasauz gand o labennerez.
6. Tud 'zo hag a dav, o veza n'o-deus ket ar skiant da gomza : lod all a dav, o veza ma anavezont an amzer deread evid komza.
7. An den fur a davo beteg eun amzer : hogen an den skañv ha diboell ne lakay ket a evez ouz an amzer.
8. An hini a lavar kalz gerioù, a hloazo e ene ; hag an hini a gemer eur galloud direiz, a vezo kasaet.
9. An den digelenn a ya don en droug : ar pezh a gar a dro en e haou.
10. Eur ro 'zo hag a zo didalvez : hag eur ro 'zo hag en-deus eur gobr daougement.
11. Tud 'zo hag a gar o holl en o gloar ; ha lod all hag a zav o fenn en o uvelded.
12. Tud 'zo hag a zaspren kalz a draou a briz dister, hag a baeo anezo seiz gwech kemend-all.
13. An den fur a zeu da veza karadeg en e gomziou : hogen ar pezh a zo dudiuze en dud diboell a zinaouo.
14. Ro an den diboell ne vezo ket talvouduz dit : rag gand seiz lagad e sell ouzit.
15. Nebeud e roy, hag e rebecho kalz : pa zigor e henou, e teu flammou anezañ.
16. Tud 'zo hag a brest hirio, hag a houlenno warhoaz ar pezh o-deus prestet : ar re a ra en doare-ze a zo kasauz.
17. An den diboell n'en-devezo ket a vignon, ha ne vezo ket kavet mad ar mad a ra ;
18. Rag ar re a zebr e vara o-deus gwall deodou. Ped gwech ha gand pegement a dud e vezo greet goap anezañ ?
19. Rag ne ziskouez ket eur poell reiz, pa ro ar pezh a dlee da viroud, pe zoken pa ro ar pezh na dlee ket da viroud.
20. An hini a lez da goueza gwall herioù euz e deod, a zo heñvel ouz an hini a gouez diwar an doenn war al leur : evel-se diskar ar gwall-dud a hoarvezo en eun taol.
21. An den disneuz a zo evel eur rambre gwan, a zo bepred e genou an dud diskiant.
22. Eur ger fur a vezo gwallzegemeret euz a henou eun den diskiant ; o veza n'e lavar ket en e amzer.

23. Tud 'zo ha na behont ket, o veza na hellont ket, hag o-deus c'hoant d'e ober, pa emaint en ehan.

24. Tud 'zo hag a goll o ene gand ar vez : e golla a raint en abeg da eun den diboell : en em golla a raint o-unan dre o azaouez evid eun den all.

25. Tud 'zo hag a ro o ger da eur mignon gand ar vez, hag e laka evid netra da enebour.

26. Eur pehed mezuz eo ar gaou e genou eun den ; bepred en em gav e genou an dud diboell.

27. Gwell eo eul laer eged eun den a lavar gevier bepred : ar holl o-devezo o-daou e degouez.

28. Eur vuhez heb enor eo hini an dud gaouiad : o mezegez a vezo ganto bepred.

29. An den fur en em ziskouez e-unan en e gomziou ; hag an den poelleg a vezo hetuz d'ar re vraz.

30. Neb a hounid e zouar, a zastumo berniou ed : neb a ra oberiou reiz, a vezo uhellaet e-unan : hag an hini a zo hetuz d'ar re vraz, a deho diouz ar fallagriez.

31. Ar goprou hag ar roou a zall daoulagad ar varnerien ; hag i a zo en o genou evel eun den mad pehini a vir outo na gelennint.

32. Ar furnez kuzet hag eun teñzor en disgwel, da betra int-i mad ?

33. Gwell eo gand an hini a guz e ziouziegez, eged an hini a guz e furnez.

XXI. Pennad.

Penaoz e tleer tehoud diouz ar pehed.

1. Va mab, ha pehet eh-eus ? Na beh mui ; hogen ped evid ma vezo distaolet dit da behejou koz.

2. Teh diouz ar pehed evel a-zirag eun naer : rag mar tostaez outañ, e krogo ennout.

3. Dent leoned eo e zent, gand pere e laz eneou an dud.

4. Ar fallagriez a zo heñvel ouz eur hleze a zaou droh : ar gouli a ra ne bare ket.

5. An dismegañsou hag ar hunuhennou a gaso ar madou da netra : an ti ar pinvidika a vezo dismantret gand ar rogentez ; evel-se e vezo disgwriennet danvez an den rog.

6. Pedenn ar paour a zavo euz e henou beteg diskouarn Doue ; hag eñ a hasto beza reiz en e geñver.

7. Neb a gasa ar helenn, a ya war heul ar peher : ha neb a zouj Doue, a zistroy outañ a-greiz e galon.

8. An den galloudeg hag herr en e lavariou a zo anavezet a-bell ; hag an den poelleg a oar en em zizober anezañ.

9. An hini a zav e di war-goust eun all, a zo evel an hini a zastum e vein evid sevel eun ti er goañv.

10. Strollad ar beherien a zo evel eur bern stoub ; en diwez e vezint devet gand an tan.

11. Hent ar beherien a zo greet gand mein kompez ; hogen er penn diweza anezañ ema an ivern, an deñvalijenn hag an doaniou.

12. Neb a vir ar reizded, a gendalho e spered.

13. Sevenidigez doujañs Doue, eo ar furnez hag ar skiant-vad.
14. Neb n'eo ket fur er mad, ne vezo ket skiantet.
15. Eur furnez a zo hag a zo skiantet en droug : hogen n'eus ket a skiant el leh ma ema ar c'hwevder.
16. Skiant an den fur en em skigno evel eun dihlann ; hag e guzul a bado evel eur feunteun a vuhez.
17. Kalon an den diboell a zo evel eul lestr faoutet : ne zalho netra euz ar furnez.
18. Mar klev eun den a skiant eur ger fur, eñ e veulo hag e gemero evitañ . Ma e glev eun den gadal, e vezo dihettuz dezañ, hag e taolo anezañ a-dreñv e gein.
19. Lavar an den diboell a zo evel eur zamm en hent : hag an neuz vad a gaver war muzellou an den a skiant.
20. Genou an den poelleg a zo kehelet er strolladou, hag an dud a venno e gomziou en o halon.
21. Evel eun ti dismantret eo ar furnez d'an den diboell : ha gouiziegezh eun den diskiant a zo eun diroll a heriou.
22. Ar helenn a zo evid an den diskiant evel keviou ouz an treid, pe evel chadennoù ouz an dorn dehou.
23. An den diskiant a zav e vouez pa hoarz : hogen an den fur a hoarzo a-veh gouestad.
24. Ar helenn a zo evid an den poelleg eur hinklerez aour, hag evel eul lagadenn ouz e vreh dehou.
25. An den diskiant a laka êz e droad e ti e nesa : hogen an den a skiant en em ziskouez gand poell dirag eun den galloudeg.
26. An den diskiant a zello dre ar prenest en eun ti : hogen an den a skiant a chomo er-mêz.
27. An den diskiant a zelaouo ouz an nor ; hogen kement-se a vezo argaruz d'an den en-deus skiant.
28. Muzellou an den diskiant a lavaro traou diod : hogen lavariou an dud a skiant a vezo pouezet er valañs.
29. Kalon an dud diskiant a zo en o genou ; ha genou an dud fur a zo en o halon.
30. Pa villig an den fallagr an diaoul, e villig e ene e-unan.
31. Al labenner a zaotro e ene, hag a vezo kasaet gand an oll : hag an hini a chomo gantañ a vezo argaruz : an den poelleg ha taveg a vezo enoret.

XXII. Pennad.

Kolla e amzer eo kelenna an den diskiant.

1. Gand mein fank e vezo labezet an den dieg ; hag an oll a gomzo diwar e benn evid e zisprizoud.
2. Gand beuzell saout e vezo labezet an den dieg ; ha kement hini a stoko outañ, a hejo e zaouarn.
3. Mez e dad eo eur mab digelenn : hag eur verh digelenn a vezo dsileberet.
4. Ar verh fur a vezo eun degouez evid heh ozah ; hogen an hini en em wallo a vezekay he zad.
5. Ar wreg herr a vezekay he zad hag heh ozah ; ne blego ket dindan ar re fallagr ; gand an eil hag egile e vezo disprizet.

6. Eun danvez pa ne zere ket, a zo evel eur han er hañv : hogen ar furnez a sko bepred gand ar hastiz hag ar helenn.

7. Neb a zesk an den diboell, a zo evel an hini a fellfe dezañ framma gand kaol an darbod.

8. Neb a gomz ouz eun den ha na zelaou ket anezañ, a zo evel an hini a zihun eun den kousket mik.

9. Neb a gomz euz ar furnez da eun den diskiant, a gomz ouz eun den dare da gouska ; ha pa vezo peurhreet an danevell e lavaro : Piou eo hennez ?

10. Leñv war eun den maro, o veza m'en-deus kollet ar goulou : leñv ivez war eun den diboell, o veza m'en-deus kollet ar skiant.

11. Leñv nebeutoh war eun den maro, o veza ma ema en ehan :

12. Rag gwall vuhez an den diboell a zo gwasoh eged ar maro.

13. Eun den maro a leñver a-zoug seiz devez ; hogen an den diboell hag an den fallagr a dleer da leñva a-zoug oll zeiziu o buhez.

14. Na gomz ket kalz gand an den foll, ha na'z a ket gand an den diskiant.

15. En em vir dioutañ, evid na vezi ket enkrezet : ha n'en em zaotri ket gand e behed.

16. Distro dioutañ, hag e kavi an ehan : ha ne vezi ket doaniet gand e follentez.

17. Petra a zo pounnerroh eged ar plom ? Ha pe ano all a vezo roet dezañ nemed hini an den diboell ?

18. Êsoh eo dougen an trêz, an holen, hag eun dolzenn houarn, eged eun den diboell, pe diskiant, pe fallagr.

19. Ar hoad frammet ha staget war ziazez eun ti ne zeu ket da veza diframmet : evel-se ar galon frammet war eur huzul mad a chomo stard.

20. Mennoz an den skianteg ne vezo ket displeberet gand ar spont e neb amzer.

21. Evel ne hell ket eur speurenn en eul leh uhel, nag eur voger heb pri herzel ouz an avel :

22. Evel-se kalon abaf an den diskiant en e vennoziou ne enebo ket ouz foudenn ar spont.

23. Evel ma chom bepred kalon abaf an den diskiant en e vennoz, heb aon ebed : evel-se e ra ivez an hini a heul bepred gourhemennou Doue.

24. Neb a vroud al lagad, a denn daerou anezañ : ha neb a vroud ar galon, a laka da zevel skiant enni.

25. Neb a daol mein ouz laboused o laka da gemeroud o nij : evel-se neb a gunuhennou e vignon a dorro e garantez :

26. Ha pa'z-pe tennet da gleze ouz da vignon, na zeu ket da zisfizioud : rag distro a zo.

27. Ha pa'z-pe lavaret traou rehuz d'az mignon, na'z-pe ket a aon : rag unvaniez a zeuy adarre ; gand na vezo ket greet a gunuhennou, nag a rebechou, nag a valhder, nag a zisklêriadur a draou kuzet, nag a daoliou yud : a-zirag ar re-ze e teho da vignon.

28. Bez feal d'az mignon endra ma ema er baourentez, evid ma vezi laouen gantañ er binvidigez.

29. Chom feal dezañ e amzer e anken, evid ma'z-pezo da lod en e zegouez.

30. An êzenn a zeu er-mêz euz ar forn, hag ar moged a zav, a-barz ma weler an tan : evel-se ar malloziou, ar hrozou hag ar gourdrizou a ziaraog ar skuill gwad.

31. N'am-bezo ket a vez o stoui dirag va mignon : ne guzin ket dirazañ : ha mar gwall-aos ahanon, e houzañvin kement-se.

32. Kement hini a glevo meneg anezañ, en em viro dioutañ.

33. Piou a lakay eun diwall war va genou, hag eur stagell stard war va muzellou, evid n'am lakaint ket da goueza, ha na vezin ket kollet gand va zeod ?

XXIII. Pennad.

Pedenn a-eneb ar rogentez ha pehejou all.

1. Aotrou va zad, ha mestr va buhez, n'am dilez ket en o huzul : ha n'am lez ket da goueza ganto.

2. Piou a gelenno mennoziou va spered, hag a zesko ar furnez d'am halon, evid na espernint ket ahanon em diouiziegeziou, ha na vezo ket gwelet va fehejou.

3. Evid na gresko ket va diouiziegeziou, na vuio ket va gwallou, na founno ket va fehejou, na gouezin ket dirag ar re a gasa ahanon, ha n'en em laouennay ket va enebour en abeg din ?

4. Aotrou va zad, ha Doue va buhez, n'am dilez ket en o mennoz.

5. Na ro ket din daoulagad rog, ha pella diouzin peb gwall-youl.

6. Pella diouzin diboell ar hov ; na groget ket ennon diboell ar hadaliez ; ha n'am ro ket da froudenn eun ene divez ha dizalh.

7. Selaouit, va bugale, kelenn ar genou : neb e viro, ne vezo ket kollet gand e vuzellou, ha ne gouezo ket e gwall oberiou.

8. Ar peher a vezo kemeret gand e rogentez ; an den rog hag al labenner a gavo o lamm ennañ.

9. Arabad eo dit boaza da henou da doui : rag e meur a zoare e kouezer neuze.

10. Na vezet ket aliez ano Doue en da henou ; na vesk ket en da lavariou anoioù ar zent ; rag ne vezi ket didamall ganto.

11. Rag evel ar sklav pehini a gastizer aliez, a zoug bepred ar bloñsou ; evel-se neb a dou hag a halv aliez ano Doue, ne vezo ket glan a behed.

12. Neb a dou aliez, a vezo leun a fallagriez, hag ar gouli na'z ay ket er-mêz euz e di.

13. Ha ma ne zeven ket, e behed a vezo warnezañ : ha mar deu da douella, e peho diou wech.

14. Ha mar tou en aner, ne vezo ket didamallet : hag e di a vezo leun gand ar boan a vezo distaolet dezañ.

15. Eur ger all a zo hag a zo eur ger a varo : ne vezo ket kavet e degouez Jakob.

16. Rag an dud reiz a bella diouz an oll draou-ze, ha n'en em roont ket d'ar gwallou.

17. Arabad eo dit boaza da henou diouz al lavariou dievez ; rag geriou a behed a zo bepred enno.

18. Az-pezh koun euz da dad hag euz da vamm, o veza ma emhout e-kreiz ar re vraz :

19. Gand aon na vijes ankounac'haet gand Doue dirazo ; ha goude beza deuet da veza diboell gand da zoareou don, na gouezjes er vezegez ; na vije gwell ganez na vijes ket ganet, ha na zeujes da villiga deiz da hanedigez.

20. An den boazet da lavared geriou flemmuz, ne wellay ket bed e vuhez.

21. Daou rumm tud a beh aliez, hag an trede a zedenn warnezañ ar vuaneged hag ar gollidigez.

22. An ene a zev evel eun tan leskidig, ne vougo ket ken n'en-devezo lonket eun dra.

23. An den a walldra gand e gorv e-unan, ne ehan ket ken n'en-deus lakaet an tan da gregi.

24. D'ar gastaouer peb bara a zo c'hwek ; ne skuizo ket o pehi beteg penn e vuhez.

25. An den a zaotr e wele a zispriz e ene, hag a lavar : Piou am gwel ?

26. An amhoulou a zo war-dro din, ar mogeriou a holo ahanon, ha den n'am gwel : rag piou am-bezo-me aon ? An Uhel-meurbed n'en-devezo ket a goun euz va fehejou.

27. Na boell ket penaoz lagad an Aotrou a wel pep tra : ha penaoz eo pellaad dioutañ doujañs Doue, kaoud hepken doujañs an dud, ha kaoud aon hepken rag daoulagad an dud :

28. Ha ne anavez ket penaoz daoulagad an Aotrou a zo kalz lugernusoh eged an heol ; penaoz e sellont ouz oll heñchou an dud, e welont beteg goueled al lonk, beteg kalonou an dud, ha beteg el lehiou ar re guzeta.

29. Rag an Aotrou Doue a anaveze oll draou ar bed a-barz ma oant krouet : evel-se e wel ivez anezo goude ma int bet greet.

30. An den-ze a vezo kastizet el leuriou-kêr ; lakaet e vezo da dehoud evel ebeul ar gazeg : ha pa vezo an nebeuta war evez, e vezo kroget ennañ.

31. Mezekaet e vezo dirag an oll, o veza n'en-deus ket poellet doujañs an Aotrou.

32. Evel-se e c'hoarvezo ivez gand kement gwreg a zilezo heh ozah, hag a roy dezañ da her mab an avoultriez.

33. Rag da genta he-deus dizentet ouz lezenn an Uhel-meurbed ; d'an eil he-deus pehet ouz heh ozah ; d'an trede eo bet kouezet en avoultriez, hag he-deus bet bugale euz a eur gwaz all.

34. Houmañ a vezo kaset er strollad, hag e vezo arvestet ouz he bugale.

35. He bugale ne wriziennint ket, hag he skourrou ne roint ket a frouez.

36. Er valloz e vezo lezet an eñvor anezi, hag he mezegez ne vezo ket lamet.

37. Hag ar re a zeuy he goude a anavezo penaoz n'eus netra a welloh eged doujañs Doue ; ha netra a hwekoh eged heulia gourhemennou an Aotrou.

38. Eur hloar vraz eo heulia an Aotrou : rag eñ eo a ro deziou hir.

XXIV. Pennad.

Madou braz pere o-deus o mammenn er furnez.

1. Ar furnez en em welo heh-unan ; en em enori a ray e Doue, en em vugadi a ray e-kreiz he fobl.

2. Digeri a ray he genou e strolladou an Uhel-meurbed, hag en em vugadi a ray dirag armeou an Aotrou.

3. E-kreiz he fobl e vezo gorroet, hag e vezo meulet e strollad an oll zent.

4. Meuleudi a gavo e-touez an oll re zilennet, hag e-kreiz ar re venniget e vezo benniget, hag e lavaro :

5. Euz a henou an Uhel-meurbed on deuet ; a-raog an oll grouadurien on bet ganet.

6. Me eo em-eus lakaet da zevel en neñv eur houlaouenn ha na vezo ket mouget, hag em-eus goloet an douar oll evel gand eur goabrenn.

7. Bet on o chom el lehiou uhel, ha va zron a zo en eur peul koabreg.

8. Greet em-eus va-unan tro an neñv, eet on beteg goueled al lonk, war koummou ar mor em-eus baleet ;

9. Ha dre an douar oll em-eus kerzet.

10. An aotrouniez em-eus bet war an oll boblou, ha war an oll vroadou.

11. Mahet em-eus gand va galloud kalonou an oll dud, braz ha bihan ; hag en oll draou-ze em-eus klasket eul leh a ehan, hag e chomin e degouez an Aotrou.

12. Neuze krouer ar bed en-deus komzet ouzin, ha roet e hourhemennou din : hag an hini en-deus va hrouet, a zo bet arzavet dindan va zelt ;

13. Hag en-deus lavaret din : Chom e Jakob, ha bezet Izrael da zegouez dit, hag en em wrizienn e-touez va re zilennet.

14. Adaleg ar penn kenta hag a-barz ar hantvedou on bet krouet, ha ne ehanin ket da veza beteg an amzer da zond, hag em-eus greet va zervij dirazañ en ti santel.

15. Evel-se on bet startaet e Sion, hag em-eus ivez arzavet er gêr zantel, ha va galloud a zo e Jeruzalem.

16. Gwriennet em-eus er bobl enoret, degouez pehini a zo lodenn va Doue ; hag e strollad ar zent on eet da chom.

17. Savet on evel gwez-sedr al Liban, hag evel ar gwez-siprez war menez Sion.

18. Savet on evel ar gwez-palmez e Kadez, hag evel gwezigou roz e Jeriko.

19. Savet on evel eur wezenn gaer a olived er mêziou, hag evel eur wernenn plantet war an heñchou war ribl an dour.

20. C’hwez-vad em-eus roet evel ar sinamom hag ar balzam ar c’hweka : c’hwez-vad em-eus roet evel ar mir ar gwella.

21. Louzaouet em-eus va zi evel storaks, ha galbanom, hag onika, hag aloez, hag evel ezañs al Liban kouezet anezañ e-unan : ha va hwez a zo evel ar balzam divesk.

22. Va skourrou em-eus ledet evel an terebint ; va skourrou a zo skourrou a enor hag a hras.

23. Bleun a hwez-vad em-eus roet evel ar winienn ; va bleun a zo frouez a enor hag a zereadegez.

24. Me eo mamm ar garantez hlan, hag an doujañs, hag an anaoudegez, hag ar ged santel.

25. Ennon ema oll hras an hent hag ar wirionez ; ennon ema oll hed ar vuhez hag ar vuhezegez vad.

26. Deuit etrezeg ennon, c’hwi oll pere a youl ahanon, hag en em leugnit gand va frouez :

27. Rag va spered a zo c’hwekoh eged ar mel, ha va degouez dreist ar mel ar gwella.

28. An eñvor ahanon a yelo beteg en diweza kantvedou.

29. Ar re a zebr ahanon, o-devezo naon c’hoaz ; hag ar re a ev ahanon, o-devezo sched c’hoaz.

30. Neb a zelaou ahanon ne vezo ket mezekaet : hag ar re a vezo reizet ganen ne behint ket.

31. Ar re a sklêra ahanon, o-devezo ar vuhez da viken.

32. Kement-mañ eo al levr a vuhez, ha kevredigez an Uhel-mourbed, hag anaoudegez ar wirionez.

33. Moizez en-deus roet deom al lezenn gand kemennou ar reizded, an degouez da di Jakob, hag ar gouestlou da Izrael.

34. An Aotrou en-deus roet e her da Zavid e zervijer penaoz e lakafe da zevel anezañ eur roue kreñv-braz, pehini a vezo azezet war eun tron a hloar da viken ;

35. Pehini a skuill ar furnez evel ar fizon⁴¹⁴, hag evel an tigr e deiziou ar frouez nevez ;

36. Pehini a skuill ar poell evel an Eufratez, pehini a zihlann evel ar Jordan e mare an east ;

37. Pehini a gas ar helenn evel ar goulou, hag a hwez e zoureier evel ar Gehon e deiz ar vendem.

38. Eñ eo en-deus da genta anavezet ar furnez, hag an den gwan ne gave ket anezi.

39. Rag ehonnoh eo he mennoziou eged ar mor, ha donnoh he huzulioù eged al lonk braz.

40. Me eo ar furnez em-eus lakaet da skuilla steriou.

41. Me a zo deuet er-mêz euz ar baradoz evel gouer doureier braz an aven, evel kan eur ster, hag evel eur san-dour.

42. Lavaret em-eus : Doura a rin gwezigou va liorz, hag e roin dour a-walh da frouez va frad.

43. Ha setu va han a zo deuet da veza eur ster vraz, ha va ster evel eur mor.

44. Hga ar goulou a skiant a skuillin war ar bed oll a vezo evel goulou-deiz ; e zanevella a rin da viken.

45. Mond a rin beteg goueled an douar, hag e sellin ouz ar re oll a zo kousket ; hag e sklêrain ar re oll a laka o ged en Aotrou.

46. Skuilla a rin c'hoaz eur helenn evel hini ar brofeded, hag e lezin anezañ d'ar re a glask ar furnez, ha ne ehanin ket da veza ganto a ouenn e gouenn beteg ar hantved santel.

47. Gwelit penaoz n'eo ket evidon hepken em-eus labouret, hogen evid ar re oll pere a enklask ar wirionez.

XXV. Pennad.

Doujañs Doue. Drougiez ar vaouez.

1. Tri zra a zo hetuz d'am spered, hag a zo kavet mad gand Doue ha gand an dud ;

2. Unvaniez ar vreudeur, karantez ar gerent, eun ozah hag eur wreg unvan-braz.

3. Tri rumm tud 'zo hag a gasa va ene ; hag eh argarzan o buhez :

4. Eun den paour ha rog, eun den pinvidig ha gaouiad, hag eun den koz diboell ha diskiant.

5. Ar pezh n'eh-eus ket dastumet en da yaouankiz, penaoz e kavi anezañ en da gozni ?

6. Peger kaer eo d'ar bleo gwenn barna mad, ha d'ar re goz kuzulia gand reizded !

⁴¹⁴ ar fizon : ar bizon (?)

7. Pegement e tere ar furnez ouz ar re goz, hag ar poell hag ar huzul ouz ar re o-deus ar galloud !
8. Ar ouiziegez vraz eo kurunenn ar re goz, ha doujañs Doue en o gloar.
9. Nao zra a zeu d'am spered hag a gavan hetuz, hag an degved a roin da anaoud d'an dud gand va lavariou :
10. Eun den a gav e levenez en e vugale, a vev hag a wel diskar e enebourien.
11. Eüruz eo an hini a chom gand eur wreg skiantet, pehini n'eo ket bet kouezet gand e deod, ha n'eo ket bet dindan beli tud disterroh egetañ.
12. Eüruz eo an hini a gav eur gwir vignon, hag a zanevell ar reizded da eur skouarn a zelaou anezañ.
13. Peger braz eo an hini en-deus kavet ar furnez hag ar ouiziegez ! hogen n'eus hini brasoh eged an hini a zouj an Aotrou.
14. Doujañs Doue a zav dreist pep tra.
15. Eüruz eo an den da behini eo bet roet doujañs Doue ; ouz piou e lakaim ez eo heñvel ?
16. Doujañs Doue a zo ar penn kenta euz ar garantez anezañ : eun derou a feiz a dleer da staga outañ.
17. Doan ar galon 'zo eur gouli ar brasa ; ha drougiez ar vaouez 'zo eur falloni dreist penn.
18. An den a hell gouzañvi an oll houliou, kentoh eged gouli ar galon.
19. Hag an oll zrougiezou, kentoh eged drougiez ar vaouez :
20. Hag an oll hlahariou, kentoh eged an hini a zeu digand ar ra a gasa ahanom ;
21. Hag an oll gastizou, kentoh eged hini on enebourien.
22. N'eus penn ebed gwasoh eged penn an naer ;
23. N'eus buanegez ebed gwasoh eged buanegez ar vaouez. Gwell eo chom gand eul leon hag eun êrouant, eged chom gand eur gwall vaouez.
24. Drougiez ar vaouez a dro he dremm : eur sell fero a gemer evel eun ours ; teñval e teu evel eur sah.
25. E-kreiz e gerent en em glemm heh ozah, hag o klevoud komza anezi eh huanad goustad.
26. Skañv eo peb drougiez e-keñver drougiez ar vaouez ; ra gouezo da lod d'ar peher.
27. Evel eur menez trêzeg ouz treid eun den koz, evel-se eo gwall deod eur vaouez da eun den habask.
28. Na zell ket ouz kened ar vaouez, ha na hoanta ket eur vaouez evid he hened.
29. Buanegez ar vaouez, hag he rogoni, hag he mezegez, a zo braz.
30. Ma he-deus ar wreg ar galloud, e sav a-eneb heh ozah.
31. Ar gwall wreg a zo glahar ar galon, doan an dremm, ha gouli ar vuhez evid heh ozah.
32. Ar wreg ha na laka ket heh ozah da veza eüruz, a zo dinerzidigez e zaouarn, ha gwanidigez e zaoulin.
33. Euz ar wreg e teu pennabeg ar pehed, ha drezi eo e varvim oll.
34. Na ro ket a ode d'an dour, peger bihan bennag e vezo ; na da eur wall wreg ar frankiz da vond er-mêz.
35. Ma ne vale ket ouz da zorn, e ray mêz dit dirag da enebourien.
36. Pella hi diouz da gorv, gand aon an douellje ahanout.

XXVI. Pennad.

Meuleudi ar wreg vad.

1. Eüruz eo ozah eur wreg vad : rag daou-gement e vezo niver e vloaveziou.
2. Ar wreg kreñv a zo levenez heh ozah ; hag hi a gargo a beoh e vloaveziou.
3. Ar wreg vad a zo eul lodenn vad ; al lodenn eo euz ar re a zouj Doue ; roet e vezo da eur gwaz evid e vad-oberiou.
4. Bezent pinvidig pe baour, e vezo mao o halon, hag o dremm a vezo laouen bepred.
5. Rag tri zra en-deus bet aon va halon, hag en trede eo bet gweñvet va dremm gand ar spont ;
6. Kasoni eur gêr, dispah eur bobl,
7. An drougkomz gaou, a zo oll gwasoh eged ar maro ;
8. Hogen ar wreg oazuz a zo anken ha glahar ar galon.
9. Teod ar wreg oazuz a zo evel eur skourjez, en em ro da anaoud d'an oll.
10. Evel yeo an ejenned a stegner war ar harr, evel-se eo ar wall wreg : an hini a zalh anezi a zo evel an hini en-deus paket eur grug.
11. Ar wreg mezveriez a vezo eun abeg a vuanegez hag a vez : ha ne hello ket kuza he dismegañs.
12. Gadaliez eur wreg a anavezer diouz he sell rog, ha diouz he daoualgad.
13. Evesa mui-ouz-mui ouz ar plah-yaouank ha na zistro ket he daoulagad, gand aon n'en em gollfe heh-unan, mar kav an dro.
14. Laka evez mad ouz an hini he-deus an herrder en he daoulagad, ha na vez ket souezet mar pella diouzit.
15. Evel eun ergerzer sehedig, e tigor he genou d'ar feunteun ; eva a ray euz an oll zoureier a vezo tost dezi ; azeza a ray war an oll goadennou a gavo ; digeri a ray he zroñs d'an oll zaeziou, ken na gouezo.
16. Doare mad eur wreg prederiuz a ray dudi heh ozah ; an nerz a skuillo en e eskern.
17. Buhezegez vad ar wreg a zo eur ro digand Doue.
18. Eur wreg skianteg a zo tavedeg ; netra ne hell beza lakaet heñvel ouz eun ene desket mad.
19. Eur hras dreist pep gras eo eur wreg santel ha mezeg.
20. Oll vuhez an aour n'eo netra e-keñver eun ene dinamm.
21. Evel an heol pa zav en neñv peleh ema tron Doue, evel-se kened eur wreg vad a zo kinklerez he zi.
22. Evel ar hleuzeur a luh war ar hantolor santel, evel-se eo kened eun dremm e barr he oad.
23. Ar wreg fur a chom stard war he zreid, evel peulioù aour war steudennou arhant.
24. Gourhemennou Doue e kalon eur wreg santel a zo evel eun diazez peurbaduz war ar mên kaled.
25. Gand daou dra eo bet doaniet va halon, hag eun trede en-deus va lakaet da vuanekaad ;
26. Eun den a-vrezel a gouez gand an dienez, hag eun den a skiant a zo disprizet.
27. Hag an hini a dremen euz ar reizded d'ar pehed, Doue a vir anezañ evid ar hleze.

28. Daou rumm micherourien a gavan diêz ha riskluz : ar marhadour en-devezo beh oh en em viroud diouz ar fazi ; hag an tavarnier na deho ket diouz pehejou an teod.

XXVII. Pennad.

*C'hoant ar madou a zo abeg da galz a behejou.
Ne dleer ket disklêria kuziadellou e vignon.*

1. En abeg d'an dienez eo bet kouezet meur a hini : hag an hini a glask pinvidikaad a zistro e zaoulagad.
2. Evel ma chom stard eur peul-koad etre daou vên, evel-se ivez e vezo enket ar pehed etre ar gwerzer hag ar prener.
3. Ar gwall a vezo kaset da netra gand ar gwaller.
4. Ma n'en em harpez ket stard war doujañs Doue, e vezo diskaret da di a-barz nemeur.
5. Evel pa hejer eur hrouer, ne chom ennañ nemed uzien, evel-se pa en em neh an den, ne gav nemed arvar.
6. Ar forn a arnod listri ar poder, hag ar hlahar a arnod an dud reiz.
7. Evel teu gorreerez ar wezenn da rei da anaoud he frouez, evel-se lavar an den a ziskouez e vennoz.
8. Na veul ket eun den a-barz ma komzo : rag hennez eo arnod an dud.
9. Ma heuliez ar reizded, e tizi anezi : hag e wiski anezi evel eur zae a enor ; hag e chomi ganti ; hag hi a warezo ahanout da viken, hag e deziz an disklêriadur e kavi eun harp stard.
10. An evned en em unvan gand ar re a zo heñvel outo : hag ar wirionez a zistro etrezeg ar re a ra heh oberiou.
11. Al leon a aoz spiou bepred d'e breiz ; eevel-se ar pehed a aoz spiou d'ar re a ra fallagriez.
12. An den santel a chom er furnez evel an heol en e houlou ; hogen an den diskiant a zo nevezuz⁴¹⁵ evel al loar.
13. E-touez ar re ziskiant, mir da heriou evid eun amzer all ; hogen e-touez ar re skianteg, en em gavi bepred.
14. Danevell ar beherien a zo argaruz, rag dudi ar pehed o laka da hoarzin.
15. Lavar an hini a dou aliez a lakay ar bleo da houpi er penn ; hag e wall gomziou a lakay da zerra an diskouarn.
16. Ar skuill gwad a zegas an daelou e-touez ar re rog, hag o gwall gomziou a flemm ar re o zelaou.
17. Neb a zikuill ar pezh a guz e vignon, a goll e fiziañs, ha ne gavo ket a vignon hervez e galon.
18. Kar da nesa, ha bez feal dezañ en da unvaniez gantañ.
19. Mar diskuillez e guziadellou, n'az i ket war e lerh.
20. Rag evel an den a goll e vignon, evel-se eo an hini a goll karantez e nesa.
21. Evel an hini a lez eul labour da vond euz e zorn, evel-se eh-eus dilezet da nesa, ha n'hen kemerer mui.

⁴¹⁵ nevezuz : ?

22. N'az i ket war e lerh, rag pell ema : rag tehet eo evel eur havr a zo en em dennet euz al lindag ; o veza ma eo gloazet e ene.

23. Ne helli mui kaoud a unvaniez gantañ. Goude kunuhennou ez eus c'hoant unvanidigez.

24. Hogen goude ma eo bet diskuillet kuziadellou e vignon, ne heller mui gedal a zistro.

25. Neb en-deus eul lagad likaouüz, a aoz fallagriezou, ha den n'en em ziwallo dioutañ.

26. Dirag da zaoulagad e vezo c'hwek da henou, hag e veulo da lavariou. Hogen d'an diwez e troy e henou, hag eh aozo spiou d'az lavariou.

27. Kalz a draou a gasaan, hogen ne gasaan netra muioh eged hennez ; hag an Aotrou a gasao ivez anezañ.

28. Mar taol eun den eur mên d'an neh e kouezo war e benn : hag ar gouli a ray eun den a zigoro e houli e-unan.

29. Neb a doull ar poull a gouezo ennañ ; neb a laka eur mên e hent e nesa, a stoko outañ ; ha neb a aoz eur spi da eun all, a vezo e-unan paket ennañ.

30. Ar gwall guzul roet a zistroio war an hini en-devezo e roet, ha ne anavezo ket hemañ a beleh e vezo deuet se dezañ.

31. An daelou hag ar hunuhennou a zo miret evid ar re rog ; hag ar hastiz en em daolo warnezo evel eul leon.

32. Ar re en em laouena euz a ziskar ar re reiz a vezo paket el lindag ; hag ar hlahaer a vevezo anezo a-barz ma varvint.

33. Ar vuanegez hag ar froudenn a zo argaruz o-diou, hag ar peher o miro bepred ennañ e-unan.

XXVIII. Pennad.

Tehoud diouz ar strivou. Droug an teod.

1. Neb a fell dezañ en em veñji, a gavo veñjañs an Aotrou ; ha Doue a viro e behejou da viken.

2. Distaol d'az nesa an droug en-devezo greet dit ; ha neuze da behejou a vezo distaolet dit pa e houlenni en da bedenn.

3. An den a vir e vuanedeged ouz eun den, hag e houlenn parediged digand Doue ?

4. N'en-deus ket a druez ouz eun dra heñvel outañ, hag e houlenn ma vezo distaolet e behejou dezañ.

5. Eñ pehini n'eo nemed kig, a vir e vuaneged, hag e houlenn trugarez digand Doue ? Piou a bedo evid ma vezo diskuillet e behejou dezañ ?

6. Az-pezh koun euz da zeiziou diweza, ha dilez peb enebiez.

7. Hag ar vreinadurez hag ar maro a zo dare da goueza war ar re a dorr gourhemennou an Aotrou.

8. Az-pezh koun euz a zoujañs Doue, ha na vuaneka ket ouz da nesa.

9. Az-pezh koun euz a gevrediged an Uhel-meurbed, ha na laka ket a evez ouz diouizieged da nesa.

10. Teh diouz ar breudou, hag e vihannii ar pehejou.

11. Rag an den buaneg a laka da zevel ar breudou, hag ar peher a lakay ar reustl e-touez ar vignoned, hag a zegaso an enebiez e-kreiz ar re a veve e peoh.

12. An tan a grog er hoad diouz ma ez eus keuneud ; evel-se buanegez an den a grog diouz e halloud ; hag e sav e vuanegez dre ma en-deus muioh a zanzez.

13. Eur striv taer a laka an tan da gregi ; eur breud taer a laka ar gwad da redeg ; hag eun teod a zoug testeni a zegas ar maro.

14. Ma c’hwezez war an elfenn, e krogo an tan : ha mar skopez warnezi, e vezo mouget ; hag ar genou eo a ra an eil hag egile.

15. Neb a zrougkomz e kuz hag an den a zaou deod a vezo milliget ; rag i o-deus reustlet kalz a dud hag a oa e peoh.

16. Teod eun trede en-deus keflusket meur a hini ; o skignet en-deus a vroad e broad ;

17. Kêriou muriet an dud pinvidig en-deus dismantret, ha lakaet da goueza tiez ar vraz :

18. Armeou ar poblou en-deus kaset da netra, ha dispennet ar broadou ar re greñva.

19. Teod eun trede en-deus lakaet da gas kuit ar gwragez kreñv, hag o dioueret euz a frouez o labouriou :

20. Neb a zelaou anezañ, n’en-devezo ket a ehan, n’en-devezo ket a vignon, war behini en em arzavi.

21. Taol ar skourjez a ra eur bloñs ; hogen taol an teod a vrev an eskern.

22. Meur a hini a zo kouezet dindan troh ar hleze ; hogen kalz muioh c’hoaz a zo maro gand o zeod o-unan.

23. Eüruz eo an hini a zo toet diouz ar gwall deod, pehini n’eo ket bet skoet gand e vuanegez, pehini n’en-deus ket dedennet warnezañ o yeo, ha n’eo ket bet ereet en e chadennou :

24. Rag e yeo, a zo eur yeo houarn ; hag e chadennou, chadennou arem.

25. Ar maro a vo, a zo eur gwall varo ; ha gwell eo ar bez egetañ.

26. Eur pennad e pado, ha ne bado ket bepred ; e heñchou ar re zireiz e kerzo ; hogen ne zevo ket ar re reiz en e flammou.

27. Ar re a zilez Doue a gouezo dindan an teod-se, pehini a zevo enno heb beza mouget ; kaset e vezo outo evel eul leon ; o diframma a ray evel eul leopard.

28. Stank da ziskouarn gand spern, ha na zelaou ket ar gwall deod : laka eun nor ha potaillou ouz da henou.

29. Laka da deuzi da aour ha da arhant, ha gra eur valañs evid poueza da heriou, hag eur wesken reiz evid da henou.

30. Ha laka evez na fazifes gand da deod, gand aon na gouezjes dirag da enebourien a aoz spiou dit, ha na zeuje da lamm da veza dibareüz ha marvuz.

XXIX. Pennad.

Red eo ober an aluzenn, ha beza kred evid e vignon.

1. Neb a ra trugarez, a ro war gampi d’e nesa ; hag an hini a zo digor e zorn evid rei, a vir ar gourhemenn.

2. Prest d’az nesa e amzer e ezomm ; hogen distaol d’az nesa en e amzer.

3. Mir da her, ha bez feal en e geñver ; hag e peb amzer e kavi ar pezh a zo red dit.

4. Kalz a dud a zell ar pezh o-deus amprestet evel pa o-defe e gavet, hag o-deus glaharet ar re o-doa o skoazellet.

5. Ken na vez roet deoh, e pokont da zorn an hini a ro, hag en o gouestlou eh uvelont o mouez :
6. Hogen pa eo deuet ar pred da zisteurel, e houlenont amzer, e reont prezegou leun a reh hag a hiboud, hag en em zigarezont war an amzer ziêz.
7. Hogen mar gellont disteurel, en em enebint : a-veh e tistaolint an hanter, hag e fello dezo e ve sellet evel eun dra kavet :
8. Ma ne hellont ket disteurel, e lakaint o hredour da golla e arhant, hag e raint anezañ eun enebour heb abeg :
9. Kunuhennou ha malloziou a roint dezañ, hag e raint dezañ an droug evid ar hras hag ar mad en-doa greet dezo.
10. Meur a hini ne fell ket dezo presti ha n'eo ket dre zrougiez, hogen gand aon e vent touellet heb abeg.
11. Koulskoude bez trugareg hag habask e-keñver an den dieneg, ha na zinah ket an aluzenn dezañ.
12. Degemer ar paour en abeg d'ar gourhemenn ; ha na lez ket anezañ da vond e zorn goulo, o veza ma ema en dienez :
13. Koll da arhant evid da vreur pe da vignon ; ha na guz ket anezañ dindan eur mên en da goll.
14. Laka da deñzor e gourhemennou an Uhel-meurbed, hag e talvezo dit muioh eged an aour.
15. Serr an aluzenn e askre ar paour, hag hi dre he fedenn a viro ahanout a beb droug.
16. ,17,18. Kreñvoh e stourmo ouz da enebour, eged tirenn ha goaf an den ar hreñva.
19. An den mad a ra kred evid e nesa : hogen neb en-deus kollet peb mez, a zilez e vignon.
20. Na ankounc'ha ket mad-ober an hini en-deus da gretaet, rag e ene en-deus roet evidout.
21. Ar peher hag al louldig a deh diouz an hini en-deus o hretaet.
22. Ar peher a vir evitañ madou e gredour ; ha gand e galon dizanaoudeg e tilez an hini en-doa e dennet a boan.
23. Eun den en-deus kretaet e nesa, hag hemañ goude-ze o kolla⁴¹⁶ peb mezegez, a zilez anezañ.
24. Ar hred e di-bred en-deus kollet meur a hini pere a oa e stad vad ; hag i a zo bet keflusket evel eul lestr e-kreiz ar mor.
25. Dre ze kalz a dud galloudeg a zo bet rediet da dehoud diouz o bro, hag a zo deuet evel katreerien e broiou a-ziavêz.
26. Ar peher a dorr gourhemenn an Aotrou, a gouezo en eur hred e-dibred : hag an hini a strivo ober kalz a draou, a gouezo er varn.
27. Skoazell da nesa diouz da halloud, ha laka evez na gouezjes da-unan.
28. Kenta tra evid buhez an den eo dour ha bara, hag eur zae, hag eun ti evid golei e vezegez.
29. Gwell eo pred boued ar paour dindan eun doenn elf, eged banveziou kaer en eun ti a-ziavêz d'an hini a zo hep ti.
30. Kav mad nebeud evel kalz, ha ne glevi ket rebechou an ti a-ziavêz.
31. Eur vuhez reuzeudig eo mond a di da di ; an hini a zo evel eun diavêziad en eun ti, ne ra netra gand fiziañs, ha ne gred ket digeri e henou.

⁴¹⁶ o kolla : galleg. pa goll.

32. Degemeret en-devezo ar re all ; roet en-devezo da zebri ha da eva da dud dizanaoudeg, hag e klevo lavariou c’hwero.

33. Tremen, ostiz, ha golo an daol ; ro da zebri d’ar re all euz ar pezh eh-eus.

34. Teh a-zirag va mignoned a zlean da enori : ezomm em-eus va zi⁴¹⁷ evid degemeroud va breur.

35. An traou-mañ a zo doaniuz evid eun den a skiant ; rebechou eun den en e di, ha krouzou eur hredour.

XXX. Pennad.

Yehed ar horv hag hini an ene a zo dreist oll aour ar bed.

1. Neb a gar e vab a skourjez anezañ aliez, evid ma vezo laouen pelloh, ha na astenno ket e zorn ouz doriou ar re all.

2. Neb a zesk e vab, a gavo e levenez ennañ ; en em veuli a ray ennañ e-kreiz e dud.

3. Neb a zesk e vab, a laka e enebour da veza erezuz, hag en em veulo ennañ e-kreiz e vignoned.

4. An tad a zo maro, hag evel na ve ket maro eo : rag war e lerh en-deus lezet eun all heñvel outañ.

5. E vab en-deus gwelet (gouelet) a-zoug e vuhez, hag eo en em laouennaet : n’eo ket en em hlaharet pa eo bet dare da vervel, ha n’eo ket bet mezekaet dirag e enebourien.

6. Rag lezet en-deus eur mab evid diwalloud e di ouz e enebourien, hag evid beza anaoudeg e-keñver e vignoned.

7. E houliou e-unan a lienenno o prederia⁴¹⁸ ene e vugale, hag e vouzellou a vezo reustlet gand kement ger a glevo.

8. Eur marh diboell a zeu da veza garo, hag eur mab lezet d’e youl a zeu da veza balh.

9. Likaou da vab, hag e sponto ahanout : c’hoari gantañ, hag e hlaharo ahanout.

10. Na hoarz ket gantañ, gand aon na zegasje doan dit, hag en diwez n’az lakaje da skrigna da zent.

11. Na ro ket a halloud dezañ en e yaouankiz, ha na zispriz ket e vennoziou.

12. Soubl e benn endra ma eo yaouank, ha skourjez anezañ endra ma eo bugel, gand aon na zeuje da galedi, na zentje mui ouzit, ha na halharje da ene.

13. Desk da vab, hag aoz anezañ, gand aon na zeuje d’az mezekaad gand e wall vuhez.

14. Gwell eo eun den paour yah ha kreñv, eged eun den pinvidig dinerz ha gloazet gand ar hleñvejou.

15. Santelez ar reizded eo yehed an ene ; gwell eo eged an oll aour hag an oll arhant ; hag eur horv kreñv eged madou braz.

16. N’eus ket a vadou brasoh eged madou yehed ar horv, ha n’eus dudi ebed dreist levenez ar galon.

⁴¹⁷ ezomm em-eus va zi : ezomm em-eus euz va zi

⁴¹⁸ o prederia : galleg. pa brederio.

17. Gwell eo ar maro eged eur vuhez c’hvero ; hag eun ehan peurbaduz eged eur hleñved diziwez.

18. Madou kuzet en eur genou serret, a zo evel eur banvez braz lakaet war-dro da eur bez.

19. Da betra eo mad ar hinnig d’an idol, pa ne hell ket e zebri nag e hwesa ?

20. Evel-se eo an hini a deh diouz an Aotrou, hag a zoug poan e fallagriez ;

21. Pehini a glemm en eur ouela gand e zaoulagad, heñvel ouz eur spaz a vriata eur plah-yaouank, hag a hircvoud.

22. Na ro ket da ene d’an doan, ha n’en em hlahar ket da-unan gand da vennoziou.

23. Levenez ar galon eo buhez an den, hag eun teñzor dihesk a zantelez ; levenez an den a ro dezañ eur vuhez hir.

24. Az-pezh truez ouz da ene o veza hetuz da Zoue, ha bez poelleg ; stroll da galon en he santelez, ha kas pell an doan diouzit.

25. Rag meur a hini he-deus lazeta an doan, ha n’eo mad da netra.

26. An erez hag ar vuaneged a verra an deiziou, hag an neh a zegas ar gozni a-barz an amzer.

27. Ar galon vad ha dineh a zo bepred en eur banvez : rag gand preder eh aozet dezañ (dezi) banveziou.

XXXI. Pennad.

Miroud ar poell er banveziou. Droug a zegas diboell ar gwin.

1. Beza bepred war vale evid dastumi madou a zizeh ar hig, hag ar mennoz euz a gement-se a laka da goll ar housked.

2. Mennoz an amzer da zond a ziskar ar skiant, hag eur hleñved griziaz a laka an ene da veza poelleg.

3. An den pinvidig a labour evid dastumi madou ; hag en e ehan en em leunio euz e vadou.

4. An den paour a labour evid kaoud e vuhezegez, hag en diwez e kouez en dienez.

5. Neb a gar an aour, ne vezo ket didamallet : hag an hini a glask ar vreinaadurez, a vezo leuniet ganti.

6. An aour en-deus lakaet meur a hini da goueza, hag en e gened o-deus kavet o holl.

7. An aour a zo eun abeg a lamm evid ar re a azeul anezañ : gwa ar re a gehel anezañ, kas a raio da netra ar re ziboell.

8. Eüruz eo an den pinvidig, pehini a zo bet kavet dinamm, pehini n’en-deus ket redet war-lerh an aour, ha n’en-deus lakaet e hed en arhant nag en e deñzoriou.

9. Piou eo hennez, hag e veulim anezañ, o veza m’en-deus greet traou burzuduz a-zoug e vuhez ?

10. Arnodet eo bet gand an aour, hag eo bet kavet klok ; peurbaduz e vezo e hloar : gellet en-deus terri al lezenn, ha n’en-deus ket he zorret ; gellet en-deus ober an droug, ha n’en-deus ket e hreet.

11. Rag se e vadou a zo bet startaet en Aotrou, hag oll strollad ar zent a zanevello e aluzennou.

12. Hag azezet out ouz eun daol vraz ? Na zigor ket da henou da genta.

13. Na lavar ket evel-henn : Kalz a draou a zo warnezi.
14. Az-pezh koun penaoz al lagad droug a zo eur gwall dra.
15. Petra a zo bet krouet gwasoh eged al lagad ? rag se euz e oll zremm e skuillo daerou, pa'z kwelo.
16. Na astenn ket da zorn da genta, gand aon na zeuje e erez d'az mezekaad, ha d'az lakaad da ruzia.
17. Na hast ket en eur banvez.
18. Poell petra eo youl da nesa diouz da hini.
19. Kemer evel eun den poelleg euz ar pezh a lakaer dirazout, gand aon, mar debrez kalz, na vijes da veza kasaet.
20. Ehan da genta da zebri dre zalh : ha n'az a ket dreist reiz, gand aon na gouezjes e fazi.
21. Mar dout azezet e-kreiz kalz a dud, na astenn ket da zorn da genta evid debri, ha na houlen ket da eva da genta.
22. Nebeud a win a zo a-walh evid eun den reizet mad ; evel-se ne vezi ket keflusket en da gousk, ha n'az-pezo ket a hloaz.
23. An digousk, an droug-kov hag ar gwentrou a zo lod an den diboelleg.
24. An den poelleg en-devezo eur housk a yehed : kouska a ray beteg ar mintin, hag e ene en am laouennay ennañ e-unan.
25. Ha mar dout bet rediet da zebri, sav diouz taol, dislonk : gwellaet e vezi, ha ne zeuy ket a gleñved d'az korv.
26. Selaou ahanon, va mab, ha n'am dispriz ket ; hag en diwez eh anavezi gwirionez va geriou.
27. En da oll oberiou beza taer, ha ne hoarvezo dit kleñved ebed.
28. Muzellou meur a hini a vennigo an hini a ro da zebri gand largentez, hag eun testeni mad a vezo roet euz e vuhezeg.
29. Ar gêr oll a grozo ouz an hini a ro da zebri gand re a bizoni, hag an testeni euz e bizoni a vezo gwir.
30. Na zoug ket da eva ar re a gar ar gwin : rag ar gwin en-deus kollet meur a hini.
31. An tan a arnod kaleder an houarn : evel-se ar gwin evet gand diboell a laka da anaoud kalonou ar re valh.
32. Ar gwin kemeret gand poell a ro eur vuhez reiz d'an den : ma evez euz anezañ gand poell, e vezi poelleg ha yah.
33. Petra eo buhez an den a zo diskaret gand ar gwin ?
34. Petra a denn ar vuhez ? Ar maro.
35. Ar gwin a zo bet krouet, adaleg ar penn kenta, evid laouennaad an den, ha nann evid e vezvi.
36. Ar gwin evet gand poell a zo levez an ene hag ar galon.
37. Ar poell er braoued a zo yehed an ene hag ar horv.
38. Ar gwin evet gand diboell a zegas an daerded, ar vuaneg, ha kalz dismantrou.
39. Ar gwin evet gand diboell a zo c'hwevder an ene.
40. Ar vezventi a zegas an herrder, a laka an den diskiant da goueza, a dorr an nerz, hag a zo abeg euz a galz a houliou.
41. Na damall ket da nesa pa vezo en eur banvez oh eva gwin ; ha na zispriz ket anezañ pa vezo dreo.
42. Na ra ket a rebech dezañ ; ha na beuk ket anezañ ; oh azgoulenni eun dra digantañ.

XXXII. Pennad.

Furnez ar banveziou. Doujañs an Aotrou.

1. Lakaet out-te da rener en eur banvez ? N'en em uhella ket : bez en o zouez evel unan anezo.
2. Az-pezh damant evito, hag azez ; ha goude m'az-pezo greet da zlead, en em laka ouz taol :
3. Evid ma en em laouennii en abeg dezo, ma tegemeri ar gurunenn evel eur hinklerez a hras, ha ma teuy dit meuleudi oll dud an banvez.
4. Komz, te pehini a zo ar henta ganet : rag deread eo kement-se ;
5. Hogen komz gand furnez ha gand gouiziegez, ha na laka ket a reustl e-touez ar ganerien.
6. Na skuill ket ar ger el leh ha ne zelaouer ket, ha na zav ket e dibred en da furnez.
7. Eun unvaniez a varzed en eur banvez, a win, a zo evel ar harboukl frammet en aour.
8. Eun niver a varzed en eur banvez e pehini eh ever gwin gand dreoded ha gand poell, a zo evel ar smaragd⁴¹⁹ frammet en aour.
9. Selaou war-dro, ha da boell a zedenno dit kalz a hras.
10. Den yaouank, komz gand beh en da gefridi.
11. Pa vezo greet diou wech eur goulenn bennag ouzit, respeont e berr-gomziou.
12. Bez e meur a dra evel pa ne oufes ket anezo ; ha selaou war tav ha gra goulennou.
13. E-kreiz ar re vraz na gomz ket da genta : hag e leh ma'z eus re goz na gomz ket kalz.
14. A-barz ar gurun e teu ar luhed ; war dremm an den poelleg e weler ar hras a-barz ma komz, hag an dalh-se a zedenn warnezañ kalz a enor.
15. Pa vezo deuet ar pred da zevel, n'en em reustl ket ; kee ar henta d'az ti, hag eno ebat ha c'hoari.
16. Ha degas en da eñvor da vennoziou, hogen hep pehed hag hep rogentez.
17. Hag e kement-se oll meul an Aotrou, pehini en-deus da grouet, hag en-deus da garget gand e oll vadou.
18. Neb a zouj an Aotrou a zegemero e gelenn : hag ar re a veill evid e glaskoud, a gavo e vennoz.
19. Neb a glask al lezenn, a vezo leuniet ganti : hag an hini en em vero gand toullerez, a gavo e lamm enni.
20. Ar re a zouj an Aotrou, a gavo eur varn reiz, hag eh enaouint o reizded evel eur houlaouenn.
21. Ar peher a bellay diouz an tamall, hag e kavo heñvelidigeziou hervez e youl.
22. An den a guzul ne gollo ket ar poell : an diavêziad hag an den rog n'o-devezo aon ebed :

⁴¹⁹ smaragd : eru mên prisiuz.

23. Pa ra zoken pep tra e-unan hag hep kuzul : hogen gand e heskinou e vezo tamallet.

24. Va mab, na ra netra hep kuzul, ha n'az-pezo ket a geuz euz ar pez ez-pezo greet.

25. Na'z a ket en eun hent kollet, ha ne stoki ket ouz ar vein : n'en em vount ket en eun hent diêz, gand aon na aozjes evid da ene eun abeg a lamm.

26. En em vir diouz da vugale, ha laka evez ouz da vevellou.

27. En da oll oberiou kred gand fealded en da ene : rag evel-se eo e virer ar gourhemennou.

28. Neb a gred e Doue a laka evez ouz e hourhemennou : hag an hini a laka e fiziañs ennañ, ne vezo ket disterraet.

XXXIII. Pennad.

Doue a reiz pep tra gand furnez. Red eo miroud e veli e-touez e dud.

1. Gand neb a zouj an Aotrou ne hoarvezo droug ebed ; hogen Doue a viro anezañ er gwall-youl, hag a denno anezañ euz a bep droug.

2. An den fur ne gasa ket ar gourhemennou hag ar hemennou ; ha ne vezo ket brevet evel eul lestr en arne.

3. An den en-deus skiant a gred e lezenn Doue, hag al lezenn a zo feal dezañ.

4. Neb a dle sklêrraad ar pez a houlenner digantañ, a aozo e her, ha goude beza pedet evel-se e vezo selaouet outañ, e viro ar gelennadurez, ha neuze e lavaro e her.

5. Kalon an den diskiant a zo evel rod eur harr : hag e vennoz a zo evel eun êl a dro.

6. Eur mignon goapaer a zo evel eur marh sailler, pehini a hwirin dindan kement hini a zo pignet warnezañ.

7. Perag eo-eñ brasoh eun deiz eged eun deiz all, hag ivez eur goulou eged eur goulou all, ha c'hoaz eur bloaz eged eur bloaz all, gand eun heveleb heol ?

8. An Aotrou eo en-deus o disheñvellet gand e ouiziegez, pa en-deus krouet an heol, pehini en-deus heuliet e hourhemenn.

9. Eñ eo en-deus disheñvelet an amzeriou, hag an deziou lid e-touez an dud, pere o-deus lidet lod euz an deziou-ze er pred ma oa bet merket.

10. Lod euz an deziou-ze en-deus Doue savet ha gouestlet, ha lod all en-deus lakaet e niver an deziou pemdez. Hag an dud oll a zo deuet euz a unan hepken, hag euz an douar, a behini eo bet krouet Adam.

11. Doue en-deus o rannet e meur a gelenn, hag en-deus troet o heñchou e meur a zoare.

12. Lod anezo en-deus savet ha benniget ; lod en-deus santelet hag unanet gantañ ; lod all en-deus milliget hag uvelet, hag en-deus o dilezet goude ma int bet en em rannet o-unan.

13. Evel ma ema ar pri e dorn ar poder, pehini e ver hag e zoare diouz e youl,

14. Hag a ra gantañ ar pez a gar : evel-se an den a zo etre daouarn an hini en-deus e grouet, pehini a zistaolo dezañ hervez e varnedigez.

15. Ar mad a zo 'eneb d'an droug, hag ar vuhez d'ar maro : evel-se ar peher a zo 'eneb d'an den reiz. Evel-se mar sellez piz ouz oll oberiou an Uhel-meurbed, o havi daou ha daou, unan a-eneb unan.

16. Ha me a zo bet dihunet an diweza, hag evel ar re a zastum ar greun rezin war-lerh ar vendacherien⁴²⁰.

17. Ha me ivez em-eus lakaet va ged e bennoz Doue : hag evel an hini a vendach⁴²¹, em-eus karget leun ar veol.

18. Arvestit penaoz n'eo ket evidon hepken em-eus labouret, hogen evid ar re oll pere a glask ar gelennadurez.

19. Va zelaouit, c'hwi tud vraz, ha c'hwi tud euz ar bobl ; ha c'hwi pere a ren ar strolladou, digorit ho skouarn.

20. Na ro ket a halloud warnout, endra ma out beo, d'az mab, na d'az kwreg, na d'az preur, na d'az mignon : na ro ket da vadou da eun all, gand aon na zeufe keuz dit, ha na ve red dit o fedi da rei dit.

21. Endra ma vevez ha ma trehwezez, na lakaet den ahanout da drei war gement-se,

22. Rag gwell eo ma teuje da vugale d'az pedi, eged ma ve red dit selloud e daouarn da vugale.

23. En da oll oberiou mir evidout ar henta galloud.

24. Na ra ket a namm d'az kloar. En deiz diweza euz da vuhez, hag e pred da varo, rann da zegouez.

25. Ar boued-chatal, ar wialenn hag ar zamm a zo dleet d'an azen ; ar bara, ar helenn hag al labour d'ar sklav.

26. Gand ar helenn e labour : anez ne glask nemed an ehan : laosk an dorn dezañ, hag e klasko ar frankiz.

27. Ar yeo hag al lerennou a laka da blega chouk an ejenn ar haleta, hag al labour aketuz a laka da zoubla ar sklav.

28. An enkreiz hag ar hefiou a zo mad evid ar gwall sklav ; kas eñ d'al labour, gand aon na ve lezireg.

29. Rag al leziregez a zesk kalz a zrougiez.

30. Dalh eñ el labour : rag eno eo e tle beza. Ma ne zent ket ouzit, laka eñ da blega gand ar hefiou ; hogen na vez direiz e-keñver den ebed, ha na ra netra a hriziaz, heb beza e vennet mad.

31. Ma eh-eus eur sklav feal, ra vezo dit ker evel da vuhez : gra en e geñver evel ma ve da vreur ; o veza ma eh-eus e brenet gand da wad.

32. Mar gwall-aozez anezañ ha gand direizded, e teho kuit.

33. Ha mar teh diouzit, ne ouezi peleh mond evid e gavoud.

XXXIV. Pennad.

Peger stard eo ar re o-deus doujañs Doue.

1. Ar ged didalvez, hag ar gevier a zo evid an den diskiant : an dud diboell a zav tiez war an huñvreou.

⁴²⁰ ar vendacherien : ar winierien, ar winiennierien.

⁴²¹ an hini a vendach : a winienna.

2. An hini en em stag ouz gweledigeziou gaou, a zo evel an hini a fell dezañ kemeroud ar skeud, ha mond war-lerh an avel.
3. Gweledigez an huñvreou a zo evel skeudenn eun den en em wel e-unan en eur melezour.
4. Gand eun dra dihlan petra a vezo glannaet ? Euz ar gaou petra a zeuio da wir ?
5. Diouganou ar fazi, hag aroueziou gaou, hag huñvreou ar gwall dud n'int nemed avel.
6. Pennadou n'int ken, evel c'hoantou eur wreg vrazez : na ro ket da galon d'ar gweledigeziou-ze, nemed e vent kaset dit gand an Uhel-meurbed :
7. Rag an huñvreou o-deus lakaet meur a hini da fazia, hag ar re o-deus lakaet o ged enno a zo bet kouezet.
8. Ger al lezenn a vezo sevenet heb gaou, hag ar furnez a vezo splann e genou an den feal.
9. Petra a oar an hini n'eo ket bet arnodet ? An den en-deus eur ouiziegez vraz, en-devezo mennoziou braz : hag an hini en-deus desket kalz, a zanevello gand poell.
10. An den pehini n'en-deus ket eur ouiziegez vraz, a anavez nebeud a dra : hogen neb en-deus eur ouiziegez vraz, en-deus ivez kalz a ijin.
11. Petra a oar an hini n'eo ket bet arnodet ? An hini a zo bet touellet en-devezo kalz a widre.
12. Kalz a draou em-eus gwelet o kantreal, ha kalz a hiziou disheñvel.
13. A-wechou on en em gavet en abeg dezo e-taill da golla v a buhez ; hogen dieubet on bet dre hras Doue.
14. Doue a ziwallo ene ar re a zouje anezañ, hag e zell o leunio a vennoz⁴²² :
15. Rag o ged a zo en hini a zieub anezo, ha daoulagad Doue war ar re a gar anezañ.
16. An hini a zouj an Aotrou ne greno ket, ha n'en-devezo aon ebed ; o veza ma eo Doue e-unan e hed.
17. Eüruz eo ene an hini a zouj an Aotrou.
18. Ouz piou e sell, ha piou eo e nerz ?
19. Daoulagad an Aotrou a zo war ar re a zouj anezañ : eñ eo gwarez o galloud, starderez o nerz, o disheol er wrez, o skeud da greisteiz,
20. O harp pa int dare da goueza, o skoazell pa int kouezet : eñ eo a zav o ene, a sklêra o daoulagad, a ro dezo ar yehed, ar vuhez, hag ar mennoz.
21. Kinnig an hini a ra eur sakrifis euz a eur madou fallagr a zo saotret ; ha kunuhennou an dud direiz n'int ket hetuz da Zoue.
22. An Aotrou n'en em ro nemed d'ar re a glask anezañ e hent ar wirionez hag ar reizded.
23. An Aotrou ne hrata ket rouu ar re fallagr, ne zell ket ouz kinnigou ar gwall dud : ne vezo ket roet gantañ d'al lod braz euz o zakrifisou an distaol euz o fehejou.
24. Neb a ginnig eur sakrifis euz a vagadur ar beorien, a zo evel an hini a laz ar mab dirag e dad.
25. Eun tamm bara eo buhez ar beorien : neb e lam diganto a zo eun den a wad.
26. Neb a lam digand eun den bara e honez, a zo evel an hini a laz e nesa.

⁴²² a vennoz : a vennoziou (?)

27. An hini a skuill ar gwad, hag an hini a ra gaou ouz ar gopraer, a zo breudeur.

28. Mar sav unan, ha ma diskar eun all, petra a hounezont-i, nemed poan ?

29. Mar ped unan, ha mar millig eun all ; ouz mouez pehini e selaouo Doue ?

30. An hini a zo en em walhet goude beza lakaet e zorn war eur horv maro, hag a stok a-nevez outañ, petra eo bet talvezet dezañ en em walhi ?

31. Evel-se ma yun eun den goude beza pehet, ha mar gra c'hoaz an heveleb pehejou, petra a dalv dezañ en em uvellaad ? Piou a zelaouo e bedenn ?

XXXV. Pennad.

Doue a zelaou pedenn ar re baour kerkoulz hag hini ar re binvidig.

1. Neb a vir al lezenn, a zo evel pa raje kalz a ginnigou.

2. Eur sakrifis gouniduz eo miroud ar gourhemennou, ha pellaad diouz an oll fallagriezou.

3. Pellaad diouz an direizded, eo kinniga eur sakrifis evid an distaol euz or gwallou, hag evid distrei ar hastiz euz or pehejou.

4. An hini a drugareka Doue, a ginnig ar bleun gwiniz : hag an hini a ra trugarez, a ginnig eur sakrifis.

5. Pellaad diouz ar fallagriez a zo eun dra hetuz d'an Aotrou : ha pellaad diouz an direizded, eo distrei diouz ar hastiz euz e behejou.

6. N'en em ziskouezi ket da zaouarn goulo dirag an Aotrou.

7. Rag kement-se a zo greet evid senti ouz gourhemennou Doue.

8. Kinnig an den reiz a larda an aoter ; eun dra a hwez c'hwek eo dirag an Uhel-meurbed.

9. Sakrifis an den reiz a zo degemeret mad, ha ne vezo ket ankounac'haet gand an Aotrou.

10. Meul an Aotrou a-greiz da galon : ha na denn netra euz a breveudiou frouez da zaouarn.

11. Gra da oll roou gand eun dremm laouen, ha santela da zeogou gand da levenez.

12. Ro d'an Uhel-meurbed hervez ma en-deus roet dit, ha gra da ginnig a galon vad, hervez ar pezh a zo etre da zaouarn :

13. Rag an Aotrou a zo lark e-keñver ar re a ro dezañ, hag e tistaolo dit seiz gwech kemend-all.

14. Na ginnig ket roou saotret, rag n'o degemero ket.

15. N'en em harp ket war eur sakrifis direiz, rag an Aotrou a zo da varner, ha n'en-deus azaouez ebed evid den.

16. An Aotrou ne zegemero den e gaou ar paour ; selaoui a ray pedenn an hini a zo gloazet.

17. Ne zisprizo ket an emzivad a bed anezañ, nag an intañvez a skuill he heinvan dirazañ.

18. Daerou an intañvez ha na ziskennont ket beteg he divoh ; ha na harmont-i ket etrezeg an hini en-deus o lakaet da skuilla ?

19. Euz he divoh e pignont beteg an neñv ; hag an Aotrou pehini a zelaou outi ne garo ket he gweloud o ouela.

20. Neb a azeul Doue gand levenez a vezo degemeret mad gantañ ; hag e bedenn a yelo beteg ar hoabr.

21. Pedenn an den en em uvel, a dreuzo ar hoabr : ha ne vezo ket dizoaniet ken na vezo eet beteg Doue ; ha ne bellay ket, ken n'en-devezo an Uhel-meurbed sellet outañ.

22. An Aotrou ne zaleo ket ; hogen an dud reiz a varno, hag a ray eun varn vad : ar Hreñv-meurbed ne vezo mui habask en o heñver, hag e kaso an enkrez war gein e enebourien :

23. Hag e taolo e veñjañs war ar broadou, ken n'en-devezo kaset da netra an oll re rog, ha torret gwalennou ar re fallagr ;

24. Ken n'en-devezo roet d'an dud hervez o oberiou, hag hervez oberiou ha rogentez Adam ;

25. Ken na ray barnedigez e-keñver e bobl, ha ma laouennay an dud reiz gand e drugarez.

26. C'hwek eo trugarez Doue, e amzer an anken, evel ar hoabr a zegas ar glao e amzer ar zehor.

XXXVI. Pennad.

Pedenn evid ar bobl. Kened ar wreg a zegas al levenez war dremm heh ozah.

1. Az-pezh truez ouzom, Doue, Aotrou pep tra ; sell ouzom, ha diskouez deom goulou da drugareziou.

2. Degas ar spont war ar broadou n'az klaskont ket ; evid ma anavezint penaoz n'eus Doue all nemedout, ha ma tanavellint da vuzudou.

3. Sav da zorn war ar broadou a-ziavêz, evid ma welint da halloud.

4. Rag evel ma out bet santelet ennom dirazo, evel-se diskouez da veurded enno dirazom ;

5. Evid ma anavezint, evel ma on-eus e anavezet, penaoz, Aotrou, n'eus Doue all nemedout.

6. Nevez da aroueziou, ha gra burzudou ha n'int ket bet gwelet.

7. Enor da zorn, ha da vreh dehou,

8. Laka da zevel da froudenn, ha skuill da vuanegez.

9. Diskar on heskiner, ha brev on enebour.

10. Hast an amzer, hag az-pezh koun euz an diwez, evid ma tanevellint da vuzudou.

11. Ra vezo devet gand an tan ar re a vezo bet tehet, ha ra vezo kaset da netra ar re a heskin da bobl.

12. Brev penn ar re vrasa euz on enebourien, pere a lavar : N'eus Aotrou all nemedom.

13. Stroll oll vreuriezoù Jakob evid ma anavezint penaoz n'eus Doue all nemedout, ma tanavellint da vuzudou, ha ma teuint da zegouez dit, evel ma int bet er penn kenta.

14. Az-pezh truez ouz da bobl, pehini a zo bet galvet en da ano ; hag ouz Izrael pehini eh-eus lakaet heñvel ouz da genta ganet.

15. Az-pezh truez ouz Jeruzalem, kêr da zantelidigez, kêr da ehan.

16. Leugn Sion gand da heriou dilavaruz, ha da bobl gand da hloar.

17. Ro testeni d'ar re pere a zo bet adaleg ar penn kenta euz da grouidigez ; ha laka da wir ar homziou o-deus lavaret en da ano ar brofeded koz.

18. Ro gobr d'ar re o-deus da hedet, evid ma vezo kavet feal da brofeded : ha selaou pedennou da zervijerien.

19. Hevez ar bennoziou en-deus roet Aaron d'az pobl ; ha ren ahanom e hent ar reizded, evid ma ouezo kement hini a chom war an douar penaoz eo te Doue a wel an oll gantvedou dirazout.

20. Ar hov a zebr meur a damm boued ; hogen e-touez ar bouedou, lod a zo gwelloc'h eged ar re all.

21. Ar staon a anavez blaz ar hig gouez, hag ar galon skiantet ar geriou a hevier.

22. Ar galon zaotret a roy doan, hag an den skiantet a gio outi.

23. Ar vaouez a hell kemeroud eur gwaz pe eun all, hogen e-touez ar merhed, lod a zo gwelloc'h eged ar re all.

24. Kened ar wreg a laouena dremm heh ozah, hag e laka da veza karusoh eged kement a hell da hoantaad eun den.

25. Mar gell he zeod para an droug, dre m'eo leun a guñvez hag a vadelez, n'eo ket heñvel heh ozah ouz mibien all an dud.

26. Neb en-deus eur wreg vad, a zeraou diazeza e di : eur skoazell en-deus heñvel outañ, hag eur peul ouz pehini e kemer e ehan.

27. El leh n'eus ket a harz, eo gwastet an dalh ; hag el leh n'eus ket a wreg, e keinvan an den en dienez.

28. Piou a fizio en hini ha n'en-deus ket a di : pehini a glask ar gwasked e kement leh ma eo paket gand an noz, heñvel ouz eul laer a deh hag a gantre a gêr da gêr ?

XXXVII. Pennad.

Euz ar gwir vignon hag euz ar mignon gaou. Goulenni kuzul digand Doue e pep tra.

1. Kement mignon a lavaro : Ha me ivez a zo mignon d'an den-ze ; hogen eur mignon 'zo ha n'eo mignon nemed a ano. Ha n'eo ket eun dra doaniuz beteg ar maro ?

2. Rag a-wechou ar henvreur hag ar mignon a dro da enebour.

3. O ! mennoz argaruz, a beleh out savet, evid golei an douar gand da zrougiez ha da douellerez ?

4. Ar henvreur en em laouennay gand e vignon en e eurvad, hag a zeuio da enebour dezañ en amzer an enkreuz.

5. Ar henvreur en em halaharo gand e vignon en abeg d'e gov, hag e kemero an direnn ouz an enebour.

6. Evidout, na ankounac'ha ket da vignon en da galon, na goll ket an eñvor anezañ pa vezi deuet da veza pinvidig.

7. Na gemer ket a guzul digand an hini a aoz spiou dit ; kuz da vennoziou ouz ar re o-deus erez ouzit.

8. Kement kuzulier a ro e guzul ; hogen kuzulierien 'zo hag a alie evid o mad o-unan.

9. Mir da ene diouz ar huzulier ; gouez da genta petra eo e hounid : rag diouz e dalvoudegez e roy e ali ;

10. Gand aon na lakaje eur peul en douar, ha na lavarje dit :

11. Da hent a zo mad ; endra ma en em zalho rag eneb evid gweloud petra a hoarvezo ganez.

12. Goulenn ali digand an den difeiz diwar-benn an traou santel, digand eun den direiz diwar-benn ar reizded, digand eur vaouez diwar-benn an hini a erez, digand an den aonig diwar-benn ar brezel, digand ar gwerzer diwar-benn ar pez a zo da brena, digand ar prener diwar-benn ar pez a zo da werza, digand an den dizanaoudeg diwar-benn an anaoudegez-vad,

13. Digand eun den difeiz diwar-benn ar feiz, digand eun den dizeven diwar-benn ar zevenidigez, digand al labourer-douar diwar-benn e oll labour,

14. Digand ar gopraer diwar-benn labour eur bloaz, digand eur mevel dieg diwar-benn kalz a labour ; na hortoz kuzul mad ebed digand ar re-ze.

15. Hogen en em zalh bepred e-kichenn eun den santel, pa'z-pezo kavet unan bennag hag a zouj Doue,

16. Pehini en-devezo eun ene heñvel ouz da hini, hag en em hlaharo ganez, pa horelli en deñvalijenn.

17. Starta da galon en eur huzul mad, rag ne gavi ket a welloh kuzulier.

18. Ene eun den santel a ziskuill a-wechou gwelloh ar wirionez, eged seiz geder azezet en eul leh uhel evid evesaad en-dro dezo.

19. Hogen dreist-oll, ped an Uhel-meurbed, ma reno ahanout e hent ar wirionez.

20. Ra vezo diaraoget da oll oberiou gand ar ger a wirionez, ha na ra netra nemed goude eur huzul stard.

21. Eur gwall her a zaotro ar galon : anezi eo e teu ar pevar zra-mañ, ar mad hag an droug, ar vuhez hag ar maro ; ha kement-se a zo dindan kabestr eun teod eskuit. Tud 'zo hag a zo gouizieg a-walh evid deski kalz a re all, hag a zo didalvez en o heñver o-unan.

22. Tud gouizieg 'zo hag a zesk meur a hini, hag a zo dudiuze en o heñver o-unan.

23. Neb a gomz en eun doare touelluz, a zo kasauz : dioueri a ray pep tra.

24. N'eo ket bet roet ar hras dezañ gand an Aotrou ; rag dioueri a ra peb furnez.

25. Eun den fur 'zo, hag a zo fur evitañ e-unan ; ha frouez e skiant a zo meuluz.

26. An den fur a zesk e bobl ; ha frouez e skiant a zo feal.

27. An den fur a vezo leuniet a vennoziou, hag ar re a welo anezañ her meulo.

28. Buhez an den n'en-deus nemed eun niver a zeiziou : hogen deiziou Izrael a zo diniver.

29. An den fur a zellezo enor e-kreiz e bobl, hag e ano a vevo da viken.

30. Va mab, arnod da ene endra ma out beo ; ha mar deo droug, na ro ket a veli dezañ ;

31. Rag n'eo ket talvouduz pep tra da bep hini, ha pep hini ne gav ket hetuz an heveleb traou.

32. Na vez lonteg e banvez ebed, ha n'en em daol ket war pep kig.

33. Rag al lod braz a gig a laka da veza klañv, hag al lontegez a ro an droug-kov.

34. Ar hloutoni he-deus lazet meur a hini : hogen an den poelleg en e voued a hira e vuhez.

XXXVIII. Pennad.

Enori al louzaouerien. Gwella maro e dud. Eñvori Doue e-pad al labour.

1. Enor al louzaouer en abeg d'ar red : rag an Uhel-meurbed eo en-deus e grouet.
2. Rag an oll louzou a zeu digand Doue, hag a zo gopraet gand ar roue.
3. Gouiziegez al louzaouer e zavo en enor, hag e vezo meulet dirag ar re vraz.
4. An Uhel-meurbed eo en-deus lakaet al louzeier da zavel euz an douar, hag an den fur n'o argarzo ket.
5. Eun tammig koad, ha ne hweka ket an dour c'hwero ?
6. Doue en-deus roet da anaoud d'an dud nerz al louzeier, an Uhel-meurbed en-deus roet ivez d'an dud ar ouiziegez anezo, evid ma enorint anezañ en e vuzudou.
7. Ganto eh habaska o gloaziu : hag al louzaouer a ra ganto traetou c'hwek, ha traetou all evid ar yehed ; hag e oberiou ne vezint ket kollet.
8. Rag peoh Doue en em astenn war an douar oll.
9. Va mab, n'en em zispriz ket da-unan en da gleñved, hogen ped an Aotrou, hag eñ a roy ar yehed dit.
10. Distro diouz ar pehed, eeun da zaouarn, ha glan da galon diouz peb gwall.
11. Kinnig e sakrifis ezañs c'hwez-vad ha bleuñ gwiniz, ha bezet lard da ro, ha ro leh d'al louzaouer :
12. Rag an Aotrou eo en-deus e grouet : na ballaet ket eta diouzit, rag e ouiziegez a zo red.
13. Deuet eo an amzer ma kouezi etre daouarn al louzaouerien.
14. Hag i o-unan a bedo an Aotrou, evid ma reno o ehan, hag ar yehed a fell dezo da rei d'ar re all.
15. An hini a beh dirag an hini en-deus e grouet, a gouezo etre daouarn al louzaouer.
16. Va mab skuill daerou war eur mignon maro, ha gouel evel eun den a zo gloazet-braz ; lien e gorr hervez ar hiz, ha na zispriz ket e vez.
17. Gra kañv dezañ a-zoug eun devez e c'hwervder da galon en abeg d'ar gwall deodou ; hogen na vez ket difrealzidigez en da zoan.
18. Gra kañv a-zoug eun devez pe zaou hervez dellid an den, gand aon rag an droug-komziou.
19. An doan a gas d'ar maro, hag a ziskar an nerz ; fillidigez ar galon a laka da blega ar chouk.
20. An doan en em gendalh el lehiou distro : ha buhez an den dieneg a zo evel e galon.
21. Na ro ket da galon d'an doan, hogen pell hi diouzit : az-pezh koun euz da zeiziou diweza.
22. N'o ankounac'ha ket : rag n'eus ket a zistro ; kement-se ne dalvezo netra d'an den maro, ha te da-unan a vezo gwasoh a ze.
23. Az-pezh koun euz va barn : rag da hini a zeuy ivez en heveleb doare : deh din, hirio dit.

24. Ra vezo habaskaet da geuz diwar-benn e varo, gand an ehan e pehini eo eet : ha bez frealzet, o veza ma eo eet ar spered er-mêz euz e gory.

25. Ar helenner a zeuy da veza fur e amzer e ehan : hag an hini en em geflusk nebeud, a zellez ar furnez.

26. Penaoz e hellfe en em leunia a furnez an hini a gas an arar, a laka e zudi o terhel en e zorn ar garzou gand pehini e vroud an ejenned, o laka da laboura, ha na gomz nemed euz a dirvi hag euz a gojened ?

27. E galon a ro da zistrei douar an irvi, hag e zihunou da larda ar zaout.

28. Evel-se ar halvez hag ar mañsoner a dremen an noz evel an deiz d'al labour : evel-se an hini a ra skeudennou kizellet, a laka e aket da ober traou disheñvel : e galon a ro da heulia an taolennou livet ; hag en e zihunou e peurhra e labour.

29. Evel-se ar gov a azez e-tal an anneo, hag a zell ouz an houarn a ya da zoarea : gwrez an tan a grign e grohenn, hag e houzañv bepred tan ar hovel.

30. E skouarn a zo skoet bepred gand trouz ar morzoliou, hag e lagad a evesa ouz an doare a roy d'e labour.

31. E galon a ro da beurober e labour, ha gand e zihunou hel lakay da veza kaer ha klok.

32. Evel-se ar poder a azez e-tal e labour : lakaad a ra ar rod da drei gand e dreid ; en eur preder peurbaduz ema ouz e labour, ha ne ra netra heb eun evez braz.

33. E vreh a ro an doare d'ar pri, goude m'en-deus e veret hag e droet gand e dreid.

34. E galon a ro da lifra anezañ gand eul liou lugernuz, hag en e zihunou e netay mad e forn.

35. Ar re-ze oll a laka o ged e ijin o daouarn, ha pep hini anezo a zo fur en e skiant.

36. Hebzo oll ne zaver kêr ebed.

37. Ar hêriou a zo heb tud ha dizarempred ; hogen n'ez aint ket e strolladou :

38. Na azezint ket war gador ar varnerien ; na boellint ket lezennou ar varn ; na roint ket da anaoud ar helennou hag ar bardedigeziou ; ha na gavint ket sklêridigez al lavariou kuzet :

39. Hogen startaad a raint ar pez a zo greet gand an amzer : Doue a bedont oh ober labouriou o skiant ; o ene a roont da gement-se, hag e klaskont e pep tra lezenn an Uhel-meurbed.

XXXIX. Pennad.

Doue a hopra ar re vad, hag a gastiz ar re zroug.

1. An den fur a enklasko furnez an oll re goz, hag e poellado da zeski ar brofeded.

2. Miroud a ray danevell an dud vrudet, hag ez ay en heveleb amzer e gwended al lavariou kuzet.

3. Enklaskoud a ray piz ar pez a zo kuzet el lavariou troet, hag e tisplego al lavariou kuzet.

4. E-kreiz ar re vraz e reno, hag en em ziskouezo dirag ar renerien.

5. E douar ar broadou a-ziavêz e tremeno : rag arnodu a ray ar mad hag an droug e-touez an dud.
6. Lakaad a ray e galon da veza dihun adaleg goulou-deiz etrezeg an Aotrou pehini en-deus e grouet : hag e kinnigo e bedennou d'an Uhel-meurbed.
7. Digeri a ray e henou evid ar bedenn, hag e houlenno trugarez evid e behejou :
8. Rag mar kav mad an Aotrou braz, e leunio anezañ gand spered ar furnez.
9. Hag eñ a skuillo evel eur glao geriou e furnez, hag a veulo an Aotrou en e bedenn.
10. Hag an Aotrou a reno e guzul hag e gelenn ; hag eñ a brederio traou kuzet Doue.
11. Embann a ray e-unan kentel e gelennadurez, hag e lakay e hloar e lezenn kevredigez an Aotrou.
12. Meur a hini a veulo e furnez, ha biken ne gouezo en ankounah.
13. Ne vezo ket kollet an eñvor anezañ, hag e ano a vezo enoret a rumm e rumm.
14. Ar broadou a embanno e furnez, hag ar strollad a zanevello e veuleudi.
15. Endra ma vevo, e teuy dezañ eun ano brasoh eged hini mil all ; ha pa varvo, e vezo talvouduz dezañ.
16. Embanna a rin c'hoaz ar pez a vennan : rag evel euz a froudenn on leun.
17. Eur vaouez a lavar din : Selaouit ahanon, gouenn Doue, ha dougit frouez evel roz plantet war ribl an doureier.
18. Ho-pezet eur c'hwez-vad evel al Liban.
19. Dougit bleun evel al lili, ha bezet c'hwek ar c'hwez ahanoh ; taolit skourrou a hras ; kanit kanaouennou a veuleudi, ha bennigit an Aotrou en e oberiou.
20. Savit e ano gand ho meuleudiou kaer, anzavit e veurded gand lavariou ho muzellou, ha gand mouez ho kanaouennou, ha gand son ho telennou ; hag evel-henn e leverot en ho meuleudi :
21. Oll oberiou an Aotrou a zo mad-meurbed.
22. Gand e her eo chomet an dour en e zav evel eur bern : ha gand eur ger euz e henou eo deuet evel eur poull.
23. Rag pep tra a hell beza greet pa e hourhemenn ; hag ar wellaenn a ro n'eo ket dister.
24. Oberiou an oll dud a zo dirazañ, ha n'eus netra a guzet d'e zaoulagad.
25. E zell en em astenn a gantved e kantved, ha n'eus netra a ve burzuduz dirazañ.
26. Ne dleer ket da lavaroud : Petra eo an dra-mañ ? Petra eo an dra-ze ? Rag pep tra a vezo anavezet en e amzer.
27. E vennoz a zo evel eur ster dihlannet.
28. Evel ma eo deuet al liñvadenn da holei a zour an douar oll ; evel-se buanegez Doue a vezo da zegouez d'ar broadou ha n'o-deus ket e enklasket.
29. Evel ma en-deus troet an doureier en eul leh seh, ha ma eo bet dizehet an douar gantañ ; ha ma oe bet kavet e heñchou eeun gand e bobl : evel-se ar beherien a gav en e vuaneged meur a abeg a lamm.
30. Ar madou a zo bet krouet adaleg ar penn kenta evid ar re vad ; evel-se ar madou hag an droug a zo bet krouet evid ar re fall.

31. Ar pezh a zo red dreist-oll evid buhez an dud, eo an dour, an tan, an houarn, an hollen, al lêz, ar bara bleun gwiniz, ar mel, ar rezin, an eoul, hag ar gwiskamañchou.

32. Evel ma eo kement-se eur mad evid an dud santel, evel-se e troint e droug evid an dud fallagr hag evid ar beherien.

33. Speredou 'zo hag a zo bet krouet evid ar veñjañs ; ha gand o froudenn e kreskont enkrezoù ar re fallagr.

34. E amzer ar peurzismantr, e skuillint o froudenn ; hag e habaskaint buanegez an hini en-deus o hrouet.

35. An tan, ar hazardh, an naonegez hag ar maro ; ar re-ze oll a zo krouet evid ar hastiz :

36. Kerkoulz ha dent al loened, hag ar hruged, hag an naered, hag ar hleze a dle kastiza ha kas da netra ar re fallagr.

37. Kement-se oll a zeven gand levezeg gourhemennou an Aotrou ; en em zerhel a raint aozet war an douar evid pa vezo red ; ha pa vezo deuet o amzer, e sentint krenn ouz e her.

38. Rag se on en em startaet adaleg ar penn kenta ; em-eus klasket kuzul, em-eus lakaet evez ouz ar mennoziou-ze, hag em-eus o lezet dre skrid.

39. Oll oberiou an Aotrou a zo mad, ha pep tra a vezo sevenet pa vezo deuet an amzer.

40. Ne dleer ket da lavaroud : An dra-mañ a zo gwasoh eged an dra-ze : rag pep tra a vezo kavet mad en e amzer.

41. Rag se a-vremañ meulit kevred an Aotrou a-greiz ho kalon, ha benniget e ano gand geriou ho kenou.

XL. Pennad.

Gwall-zarvoud ar madou a vammenn direiz.

1. Eur preder braz a zo tonket d'an dud oll, hag eur yeo pounner a vantr bugale Adam, adaleg an deiz ma teuont er-mêz euz a gov o mamm, beteg an deiz ma int bet beziet en douar mamm an oll.

2. O mennoziou, spontou o halon, o ratoziou arvaruz, ha deiz an diwez ;

3. Adaleg an hini a zo azezet war eun tron a hloar, beteg an hini a zo kousket war an douar ha war al ludu ;

4. Adaleg an hini a zo gwisket gand limestra, hag a zoug ar gurunenn, beteg an hini a zo goloet gand lien fetiz ; ar froudenn, an oaz, an neh, ar heflusk, an aon rag ar maro, ar vuaneged kendalhuz, hag ar strivou ;

5. En o gwele, hag en noz a-zoug o housk, o spered a zo reustlet.

6. Evel-se ne ehan an den nemed nebeud, hag evel netra ; en e gousk ema evel eur geder a-zoug an deiz :

7. Strafuillet eo gand gweledigeziou e spered, heñvel ouz an hini a deh e deiz an emgann. Pa eo savet, ha pa en em gav dizaouzan, eo souezet o veza ma eo bet spontet gand netra.

8. Kement-se a hoarvez gand an oll gig, adaleg an dud beteg la loened, ha seiz gwech muioh c'hoaz gand ar beherien.

9. Ouspenn-ze ar maro, ar gwad, ar strivou, ar hleze, ar mahou, an naonegez, an dismantr, hag ar skourjezoù all,

10. A zo bet krouet oll evid kastiza ar re fallagr : hag al liñvadenn a zo bet c'hoarvezet en abeg dezo.

11. Kement a zeu euz an douar, a zistroy en douar, evel ma tistro an doureier oll er mor.

12. Kement a zo direiz, ha kement fallagriez a vezo kaset da netra ; hogen ar feiz a bado da viken.

13. Madou ar re zireiz a zizeho evel eur froud, heñvel ouz eur gurun vraz a ra trouz a-zoug ar glao.

14. En em laouennaad a raint o tigeri o daouarn ; hogen o veza ma o-deus torret al lezenn, e vezint kollet da viken.

15. Nested ar re fallagr ne gresko ket he skourrou, evel gwriziou dihlan pere a zo horellet gand an avel war lein eur roh.

16. Ar geot glaz a gresk war an doureier ha war ribl eur ster, a vezo tennet kent eged ar geot all.

17. Ar hras a zo evel eul liorz laer hag hi benniget : an drugarez a bado da viken.

18. Buhez an hini en-deus a-walh gand gounid e labour, a vezo leun a hwevder ; er vuhez-se e kavi eun teñzor.

19. Ar vugale fur ha diazez eur gêr a laka da vrud eun ano ; hogen eur wreg dinamm a zo c'hoaz dreist an eil hag egile.

20. Ar gwin hag ar han a laouena ar galon : hogen ar garantez evid ar furnez a zo c'hoaz dreist an eil hag egile.

21. Ar zutell hag an delenn a ro eur son c'hwek ; hogen eun teod sioul a zo c'hoaz dreist an eil hag egile.

22. An neuz-vad hag ar gaerded a zo hetuz d'al lagad ; hogen glazvez eur park hadet a zo c'hoaz dreist.

23. Ar mignon a skoazell e vignon pa vez red ; hogen ar wreg hag an ozah en em skoazell c'hoaz dreist.

24. Ar vreudeur a zo eur skozaell e amzer an anken ; hogen an drugarez a zieubo c'hoaz dreisto.

25. An aour hag an arhant a starta an treid ; hogen eur huzul fur a zo c'hoaz dreisto.

26. Ar galloud hag an nerz a zav ar galon ; hogen doujañs an Aotrou a zo c'hoaz dreisto.

27. An hini en-deus doujañs an Aotrou ne ziuver netra ; n'eo ket red dezañ klaskoud eur skoazell all.

28. Doujañs an Aotrou a zo evel eul liorz venniget ; goloet eo gand eur hloar dreist peb gloar.

29. Va mab, na ren ket eur vuhez a gork : rag gwell eo mervel, eged korka gand diegi.

30. Buhez neb a hortoz e voued euz a daol eun all, n'eo ket eur vuhez ; rag en em vaga a ra gand boued ar re all.

31. Hogen neb a zo reizet ha desket en em viro.

32. D'an den diboell e vezo c'hwek goulenni e voued ; hag ar wrez a zevo e gorv.

XLI. Pennad.

Euz a goun ar maro. Gwell eo eun ano mad eged kalz a vadou.

1. O ! maro, peger c’hwerro ar houn ahanout, evid an den a vev e peoh e-kreiz e vadou.
2. Evid an den direustl, pehini a zeu a-benn a bep tra, hag a zo c’hoaz e doare da gavoud mad ar boued !
3. O ! maro, peger c’hwek eo da varn evid an den dieneg, hag a zo kollet e nerz gantañ ;
4. Pehini a zo kouezet er fillidigez, a zo leun a breder, a zo dihed, hag a goll pep habaskded !
5. N’az-pezh ket a aon rag barn ar maro. Az-pezh koun euz ar re a zo bet en da raog, hag euz ar re a zeuy da houde ; ar varn eo en-deus douget an Aotrou a-eneb pep kig :
6. Petra a hoarvezo ganez nemed dre hrad an Uhel-meurbed ? Pe e vevi deg, pe kant, pe mil vloaz :
7. Rag ne niverer ket bloaveziou ar vuhez e-touez ar re varo.
8. Mibien ar beherien a zo mibien an argaridigez, kerkoulz hag ar re a zarempred tiez ar re fallagr.
9. Degouez mibien ar beherien a yelo da netra, hag o gouenn a vezo mezekaet da viken.
10. Mibien ar fallagr en em glemmo euz o zad, o veza ma int mezekaet en abeg dezañ.
11. Gwa c’hwi, tud fallagr, pere hoh-eus dilezet lezenn an Aotrou Uhel-meurbed.
12. Pa oh bet ganet, oh bet ganet er valloz : ha pa varvot, ho-pezo ar valloz da zegouez.
13. Kement a zeu euz an douar a zistroy en douar : evel-se ar re fallagr a gouezo euz ar valloz er gollidigez.
14. Kañv an dud reiz a vez greet war o horv hepken ; hogen ano ar re fallagr a yelo da netra.
15. Az-pezh preder da hounid eun ano-mad : rag pelloh e pado kement-se dit eged mil teñzor braz ha talvouduz.
16. Ar vuhez vad n’he-deus nemed eun niver a zeiziou : hogen eun ano-mad a bado da viken.
17. Va mibien, endra emaoñ e peoh, mirit ar helennou a roan deoh ; rag eur furnez kuzet hag eun teñzor ha na weler ket, da betra int-i mad an eil hag egile ?
18. Gwell eo an den a guz e follentez eged an hini a guz e furnez.
19. Ho-pezet eta mez euz ar pezh a zeuy bremañ er-mêz euz va genou :
20. Rag n’eo ket mad kaoud mez euz a bep tra : hag an oll draou mad ne hetont ket d’an oll.
21. Ruziit euz ar hadaliez dirag ho tad hag ho mamm ; hag euz ar gevier dirag ar rener ha an den galloudeg :
22. Euz ar gwall dirag ar priñs hag ar barner ; euz ar fallagriez dirag ar strollad hag a bobl :
23. Euz an direizded dirag da eil ha da vignon : ha da ober laeroñsi el leh e pehini e chomez,
24. En abeg da wirionez ha da gevredigez Doue : red eo ruzia da lakaad an ilin war an daol, da lakaad touellerez er pezh a roez pe er pezh a gemerez :

25. Ma ne stouez ket dirag ar re a stou dirazout ; mar taolez da lagad war eur plah fall, ha mar distroez da zremm diwar unan euz da gerent.

26. Na zistro ket da zremm diwar da nesa : na gemer ket ar pez a zo dezañ heb e zisteurel dezañ.

27. Na zell ket ouz gwreg eun all ; na zarempred ket e vatez, ha n'en em zalh ket e-tal he gwele.

28. Na lavar ger flemmuz ebed d'az mignoned, ha na rebech ket ar pez eh-eus roet.

XLII. Pennad.

Meur a dra a bere na dleer ket ruzia. Teurel evez ouz e verh.

1. Na adlavar ket ar pez eh-eus klevet da lavaroud, ha na ziskuill ket ar pez a zo kuzet, hag e vezi divezegez, ha degemeret mad gand an oll. Na zeu ket da ruzia euz ar pez ez an da lavaroud dit, ha n'az-pezh ket a azaouez evid den evid ober gwall.

2. Na zeu ket da ruzia euz a lezenn hag euz a gevredigez an Uhel-meurbed, en eur varn e pehini eo fellet didamalloud eun den fallagr ;

3. Euz al lavariou etre da eiled hag an dremenidi, hag euz a rann degouez da vignoned ;

4. Euz a geit ar valañs hag ar poueziou, euz ar brenidigez e kalz pe e nebeud ;

5. Euz an touellerez etre ar re a werz hag ar re a bren, euz a gelennadurez da vibien, ha da skourjeza beteg ar gwad eur gwall sklav.

6. Gand eur wall gwreg eo mad lakaad pep tra dindan alhwez.

7. El leh ma ez eus kalz a zaouarn, serr pep tra ; ha na ro netra heb e niveri hag e boueza : skriv kement a roi hag a gemeri.

8. N'az-pezh ket a vez o kelenna an den diskiant hag an den diboell, hag o skoazella ar re goz a zo tamallet gand ar re yaouank : hag e vezi sellet evel eun den skianteg e pep tra, hag e vezi meulet gand an oll.

9. Ar verh a zo eun abeg evid he zad da evesaad e kuz bepred hag ar prederze a lam ar housk digantañ, gand aon na chomje dizemez en he yaouankiz, pe na zeuje da veza kasaet gand heh ozah mar dimez :

10. Gand aon n'en em zaotrje en he gwerhted, ha na ve kavet brazez e ti he zad ; pe mar dema gand eun ozah, ma torrje lezenn ar briedelez ; pe c'hoaz na chomje brehan.

11. Diwall striz eur verh gadal, gand aon n'az lakaje da veza e dismegañs dirag da enebourien, na ve da abeg a zroug-komz e-touez tud kêr, hag a hoab e-kreiz ar bobl, ha na ves mezekaet dirag an oll.

12. Na zalh ket da zaoulagad war kened den : ha na chom ket e-kreiz ar merhed :

13. Rag evel ma sav ar preñv en dillad, e teu fallagriez ar gwaz euz ar vaouez.

14. Rag gwell eo eur gwaz fallagr eged eur vaouez hegarad, eur vaouez a zegas ar vezegez.

15. Hogen koun am-bezo euz a oberiou an Aotrou, hag embanna a rin ar pezh em-eus gwelet. En e lavariou ema oberiou an Aotrou.

16. An heol a houlaou hag a wel pep tra, hag oberiou an Aotrou a zo leun euz e hloar.

17. Ha n'en-deus ket lakaet an Aotrou e zent da embanna e oll vuzudou, en-deus startaet o veza ma eo an Aotrou Ollhalloudeg, evid ma padint da viken evid e hloar ?

18. Furchet en-deus el lonk hag e kalon an dud : o barad en-deus anavezet.

19. Rag an Aotrou a anavez an oll skiantchou, hag a wel aroueziou an amzer da zond ; rei a ra da anaoud an traou tremenet hag an traou da zond : diskoueza a ra roudou an traou ar re guzeta.

20. Mennoz ebed ne dremen e-biou dezañ, ha lavar ebed n'eo kuzet evitañ.

21. Lakaet en-deus da skeda burzudou e furnez : a-barz an oll gantvedou edo, hag en oll gantvedou e vezo.

22. Ne heller tenna netra dioutañ ; n'en-deus ezomm ebed euz a ali eun all.

23. Pegen hetuz eo e oberiou : ha koulskoude ar pezh a hellom da arvesti anezo n'eo nemed eun elfenn !

24. Oll ez int, hag e chomint da viken, ha e kement a hourhemenn, e sentont outañ.

25. A-zaou int oll, unan ouz unan, hag hini anezo n'eo chomet diglok.

26. Kement a oa a vad e pep hini en-deus startaet. Ha piou a gavo e walh oh arvesti ouz e hloar ?

XLIII. Pennad.

Dreist peb meuleudi eo meurded Doue.

1. An oabl steredet eo a ziskouez kaerded an oberiou ar re uhella. Eñ eo braventez an neñv, ha sked e hloar.

2. An heol oh en em ziskoueza pa zav, a ziougan an deiz : eul lestr kaer eo, labour an Uhel-meurbed.

3. An douar a zev en e greisteiz, ha piou a hell gouzañvi e wrez ? Eur forn a vir en e wrez.

4. An heol a losk ar menezioù e tri doare : bannou tan a hwez ; hag ar sked euz e vannou a zall an daoulagad.

5. Braz eo an Aotrou pehini en-deus e grouet : ouz e her e hast e gerz.

6. Al loar en he oll droiou, a ziskouez an amzeriou, a zo da arouez evid ar bloavezioù.

7. Al loar eo a zesk an deizioù gouel : ar goulou anezi a zigresk, goude ma eo bet deuet da veza braz.

8. Al loar he-deus roet an ano d'ar miz : ar goulou anezi a gresk en eun doare burzuduz, ken n'eo deuet da veza klok.

9. Eul lestr e doare eur hamp a luh e penn uhella euz an neñv : lugerni a ra kaer en obal steredet.

10. Sked ar stered eo kaerded an neñv : An Aotrou eo a houlaou ar bed euz al lehiou ar re uhella.

11. Diouz lavariou an Doue santel, int dare da zeveni e hourhemnnou, ha ne fallont ket en o beillou.

12. Sell ouz ar wareg, ha bennig an hini en-deus he greet : kaer-meurbed eo en he sked.

13. Eur helh a hloar a ra en neñv : daouarn an Uhel-meurbed eo o-deus he digoret.

14. Gand e her e laka buan an erh da goueza : hasta a ra kas e luhed evid rei e varnou.
15. Rag se e tigor e deñzoriou, hag e laka ar hoabr da nija evel laboused.
16. Gand e halloud e teñvala ar hoabr, hag e laka ar hazarh da goueza diouto evel mein.
17. Gand e zell e laka ar meneziou da fiñva, ha gand e youl e c’hwez avel ar hreisteiz.
18. Heja a ra an douar ken na gren gand trouz e gurun, gand arne ar hornaoueg, ha gand ar horventennou avel.
19. Skuilla a ra an erh evel laboused a zeu da azeza war an douar, hag evel killeien-raden a ziskenn en eur gompezenn.
20. Sked e gaerder a zo hetuz d’an daoulagad, hag an dihlan anezañ a zo spontuz d’ar galon.
21. Ar reo a skuill war an douar evel holen, ha pa vez kouezet, e skorn hag e teu e doare begou askol.
22. Lakaad a ra avel an hanternoz da hweza, hag an dour a skorn evel strink. Ar skorn en em led war horre an dour, hag a ra evel eun harnez anezo.
23. Ar skorn a zev ar meneziou, a losk ar hompezennou, hag a zizeh evel eun tan ar geot glaz.
24. Ar gwella tra evid kement a zroug eo ma hast da zond eur goabrenn : hag eur gliz tomm o koueza goude ar yenienn, e gas kuit.
25. Gand eur ger euz an Aotrou e tav an avel : ar mennoz anezañ a habaska lonk an doureier : enno eo en-deus diazezet an inizi.
26. Ra zanevello ar re a ya war ar mor, ar risklou a gaver warnezañ ; hag oh e selaoui e vezim souezet-braz.
27. Eno ema oberiou braz an Aotrou, hag e vuzudou : pesked a beb rumm, loened a beb doare, hag anevaled divent.
28. Gantañ eo startaet diwez peb hent, ha pep tra a zo reizet gand e her.
29. Kalz a lavarfem, ha n’or-be ket a heriou a-walh : hogen evid e lavaroud e berr gomziou, eñ en em gav e pep tra.
30. Euz a betra eta e welim-ni anezañ ? Rag an Ollhalloudeg a zo dreist e oll oberiou.
31. Estlammuz eo an Aotrou, ha braz-meurbed ; burzuduz eo e halloud.
32. Meulit an Aotrou kement ha ma hellot ; e hloar a vezo c’hoaz dreist : e veurded a zo souezuz-braz.
33. C’hwi pere a vennig an Aotrou, meulit eñ muia ma hellot ; rag dreist peb meuleudi eo.
34. Pa zavot e veurded, kreñvait mui-ouz-mui ; na skuizit ket : rag ne boellot ket petra eo.
35. Piou a welo anezañ, hag e roy da anaoud ? Piou a zisklêrio e veurded evel ma’z eo adaleg ar penn kenta ?
36. Kalz euz e oberiou a zo kuzet ouzom, hag a zo brasoh eged ar re a anavezom ; rag bihan eo an niver euz ar re a welom.
37. Hogen an Aotrou en-deus greet pep tra, hag en-deus roet ar furnez d’ar re a vev er reizded.

XLIV. Pennad.

Amañ e weler an tadou-braz, ar brofeded hag ar roueed santel.

1. Meulom an dud-se leun a hloar, pere eo on tadou, a bere om ar ouenn.
2. An Aotrou en-deus diskouezet enno adaleg ar penn kenta e hloar hag e veurded.
3. Aotrouniet en-deus en o rouanteleziou : braz int bet gand o furnez : tud leun a boell e oant : gand o diouganou eo deuet dezo ar galloud a brofeded.
4. Gourhemennet o-deus d'ar re a veve en o amzer, hag ar poblou o-deus kavet en o furnez lavariou santel-braz.
5. Gand o skiant o-deus klasket soniou ar barzerez⁴²³, hag o-deus lezet deom kanaouennou ar skritur sakr.
6. Pinvidig int bet e furnez : ar gwir gaerded o-deus kehelet ; tud a beoh int bet en o ziez.
7. Gounezet o-deus oll e-touez o foblou eur hloar a zo tremenet a ouenn e gouenn : hag i a zo c'hoaz meulet hirio euz ar pezh o-deus o-deus greet en o amzer.
8. Ar re a zo bet ganet anezo, o-deus lezet eun ano a zanevell meuleudi o zadou.
9. Tud all a zo bet ha n'o-deus lezet meneg ebed anezo : maro int evel pa ne vijent ket bet : ganet int bet evel pa ne vijent ket bet ganet ; hag o mibien evelto.
10. Hogen ar re genta a oa tud a drugarez, hag o oberiou reiz a bado da viken.
11. Ar madou o-deus lezet d'o gouenn a chomo bepred ganto.
12. Eur bobl santel eo o nested, hag o gouenn en em gendalh e kevredigez Doue.
13. En abeg dezo eo e pad o mibien da viken ; hag o gouenn hag o gloar n'ez aint ket da netra.
14. O horvou a zo bet beziet e peoh, hag o ano a vevo a rumm e rumm.
15. Ra zanevello ar poblou o furnez, ra embanno ar strollad o meuleudi.
16. Henoh a zo bet kavet hetuz gand Doue, hag a zo bet douget d'ar baradoz, evid lakaad ar broadou da ober pinijenn.
17. Noe a zo bet kavet reiz ha klok, hag a zo deuet da unvaniez e amzer ar vuanegez.
18. Rag se en-deus Doue miret eul lod bihan a dud war an douar, pa eo deuet al liñvadenn.
19. Etre e zauarn eo bet lakaet ar gevredigez greet gand ar bed, evid na vezo ket hiviziken kaset da get pep kig gand al liñvadenn.
20. Abraham ar braz a zo bet da dad da lod braz euz ar broadou, ha n'eus bet kavet hini heñvel outañ evid ar hloar : miret en-deus lezenn an Uhel-meurbed, hag en-deus greet kevredigez gantañ.
21. An Aotrou en-deus startaet e gevredigez en e gig, hag en arnod eo bet kavet feal.
22. Rag se en-deus touet dezañ penaoz e lakaje e hloar en e ouenn, hag hel lakaje da baota evel poultr an douar ;
23. Penaoz e savje e ouenn evel ar stered, hag e ledje o degouez adaleg eur mor beteg eur mor all, hag adaleg ar ster a Eufratez beteg penn ar bed.
24. En heveleb doare en-deus greet e-keñver Izaak en abeg da Abraham.
25. E vennoz en-deus roet an Aotrou d'an oll vroadou en e ouenn ; startaet en-deus ivez e gevredigez war penn Jakob.

⁴²³ ar barzerez : ar varzoniez.

26. E vennoziou en-deus skuillet warnezañ ; e zegouez en-deus roet dezañ, hag e rannet en-deus evitañ e daouzeg breuriez.

27. Miret en-deus dezañ tud trugarezuz, pere o-deus kavet gras dirag ar bed oll.

XLV. Pennad.

Ar velegiez kreteet da Aaron ha d'e vibien.

1. Moizez a zo bet karet gand Doue ha gand an dud : e bennoz ema an eñvor anezañ.

2. An Aotrou en-deus roet dezañ eur hloar heñvel ouz hini ar zent : e lakaet en-deus da veza doujet gand e enebourien ; ha gand e heriou en-deus habaskaet an anevaled direiz.

3. E enoret en-deus dirag ar roueed : e hourhemennou en-deus roet dezañ dirag e bobl, hag en-deus diskouezet dezañ e hloar.

4. E zantelet en-deus en e feiz hag en e guñvez ; hag e zilennet en-deus e-touez an dud oll.

5. Rag Doue en-deus e zelaouet, ha klevet e vouez, hag e lakaet da vond er goabrenn.

6. E hourhemennou en-deus roet dezañ dirag e oll bobl ; al lezenn a vuhez hag a gelenn, evid deski e gevredigez da Jakob, hag e varnedigeziou da Izrael.

7. Gorreet en-deus e vreur Aaron, a oa heñvel outañ, hag eveltañ euz a vreuriez Levi.

8. Greet en-deus gantañ eur gevredigez peurbaduz : roet en-deus dezañ belegiez e bobl ; e leuniet en-deus a wenvidigez hag a hloar.

9. Eur gouriz a enor en-deus lakaet war e zargreiz ; eur zae a hloar en-deus gwisket dezañ ; eur gurunou⁴²⁴ a furnez en-deus lakaet war e benn.

10. Roet en-deus dezañ eur zae hir, eur zae verr, hag eur vantell ; lakaet en-deus war-dro d'e zae eul lod braz a gleierigou aour ;

11. Evid ma raje trouz pa valeje, ha pa vije klevet an trouz-se en templ, ma vije da gelenn da vibien e bobl.

12. Roet en-deus dezañ an arouez santel, gweet gand aour, gand limestra ha gand tane, gand eun den fur, leun a skiant hag a wirionez.

13. An arouez-se a oa greet gand eun ijin braz, gand neud tro a liou tane : daouzeg mên talvouduz a oa frammet en aour, hag i benet ha kizellet gand eun den gwevn ; evid degas da goun da Aaron daouzeg breuriez Izrael.

14. Eur gurunenn aour en-doa war e vintr, ha warnezi e oa kizellet ar sant braz, e-kreiz ar hloar hag an enor. An arouez-se a oa leun a veurded, hag hetuz-braz d'an daoulagad.

15. Ne oe biskoaz a-barz hemañ, abaoe ar penn kenta, gwisk ebed ker kaer.

16. Diavêziad ebed n'en-deus gwisket ar zae-ze, hogen e vibien hepken, ha mibien e vibien e heul an amzeriou.

17. E zakrifisou a zo bet devet bemdez gand an tan.

18. Moizez en-deus sakret e zaouarn, hag o lardet gand an eoulou santel.

⁴²⁴ eur gurunou :? eur gurunenn.

19. Doue en-deus greet gantañ ha gand e ouenn eur gevredigez peurbaduz, a bado keit ha deziou an neñv, evid ma ray ar garg a veleg, ma kano meuleudiou an Aotrou, ha ma roio da anaoud en e ano e hloar d'e bobl.

20. E zilennet en-deus e-touez an oll re veo, evid kinniga ar sakrifisou da Zoue, hag an ezañs, hag ar c'hwez-vad, evid degas da goun dezañ da veza trugareg e-keñver e bobl.

21. Roet en-deus dezañ ar galloud da embanna e gelennou, e youl hag e gevredigez, evid deski e hourhemennou da Jakob, hag evid rei da Izrael goulou e lezenn.

22. An diavêzidi a zo bet dispahet en e eneb, hag ar re a oa a-du gand Datan hag Abiron, ha gand strollad diboell Kore, a zo en em lakaet en-dro dezañ en distro, douget gand an erez.

23. An Aotrou Doue o gwelas, ha kement-se ne oa ket hetuz dezañ ; hag i a oe kaset da netra gand froudenn e vuanegez.

24. En eun doare dihez o gwannaas, hag o devas gand flammou tan.

25. Kreski a reas c'hoaz gloar Aaron ; hag e roas dezañ eun degouez a-zevri, hag e roas da lodenn dezañ preveudi frouez an douar.

26. Aoza a reas d'e vibien eur boued founnuz er preveudiou : rag debri a reont sakrifisou an Aotrou, en-deus roet dezañ ha d'e ouenn.

27. Hogen ne dle kaoud a zegouez e douar ar broadou ; rag n'en-deus ket a lodenn en o bro : an Aotrou e-unan eo e lodenn hag e zegouez.

28. Fineez, mab Eleazar, eo an trede gorreet en enor : heuliet en-deus Aaron e doujañs an Aotrou.

29. Stard e chomas e doujañs e bobl, hag e habaskaas buanegez an Aotrou ouz Izrael, gand e vadelez hag e garantez virvidig.

30. Rag se Doue en-deus greet gantañ eur gevredigez a beoh, hag en-deus roet dezañ an aotrouniez war an traou santel, ha war e bobl, evid ma chomje gantañ ha gand e ouenn da viken ar garg a velegiez.

31. Doue en-deus greet ivez kevredigez gand ar roue David mab Jese, euz a vreuriezh Juda : ar rouantelezh en-deus roet da zegouez dezañ ha d'e ouenn, evid lakaad ar furnez en or halonou, hag evid barna e bobl er reizded, gand aon na ve kollet ar madou en-doa roet dezo : hag en-deus lakaet o gloar da veza peurbaduz e heul o nested.

XLVI. Pennad.

Meuleudi Jozue, Kaleb ha Samuel.

1. Jezuz Nave a zo bet kaloneg er brezel : da brofed eo deuet goude Moizez ; braz eo bet hervez e ano :

2. Braz-meurbed eo bet evid dieubi ar re zilennet gand Doue, evid diskara an enebourien a zave en e eneb, evid rei da Izrael an douar a oa da zegouez dezañ.

3. Pebez gloar en-deus gounezet o sevel e zaouarn, hag o teurel dardou ouz ar hêriou.

4. Piou en-deus kia outañ ? Rag an Aotrou a gase e-unan e enebourien dirazañ.

5. Ha n'en-deus-eñ ket diarbennet an heol en e froudenn, ha lakaet eun deiz da veza keit ha daou ?

6. Pedi a reas an Uhel-meurbed hag an Ollhalloudeg, pa stourme e enebourien outañ a bep tu ; hag an Doue braz ha santel a zelaouas anezañ, hag a lakaas da goueza war e enebourien eur hazardh mein braz.

7. Gwinka a reas war an enebourien, hag en diarroz e tispennas anezo.

8. Evid ma anavezje ar broadou galloud an Aotrou, ha ma teskjent penaoz n'eo ket êz stourmi ouz Doue. Hag eñ a yeas bepred war-lerh an Ollhalloudeg.

9. Hag e amzer Moizez e reas, gand Kaleb, mab Jefone, eun ober a drugarez, o chom stard a-eneb an enebourien, o viroud ouz ar bobl na behje, hag o lakaad da devel kroz an drougiez.

10. Hag i o-daou a oe dilennet gand Doue evid beza dieubet euz a riskl ar maro e pehini e oa bet kouezet c'hweh-kant mil den war droad, evid ma lakajent pobl Doue da vond en o degouez, en douar e pehini e tivere al lêz hag ar mel.

11. An Aotrou a roas d'ar Haleb-se eun nerz braz : hag e oe kreñv beteg en e gozni. Pigna a reas war eul leh uhel euz an douar-ze, a chomas bepred da zegouez d'e ouenn.

12. Evid ma welje oll vibien Izrael penaoz eo mad senti ouz an Doue santel.

13. Goude-ze eo deuet ar varnerien, a anavezom oll dre o ano, pere o-deus miret o halon dinamm, ha pere n'int ket bet distroet diouz an Aotrou :

14. Pere a zellez ma vezo e bennoz an eñvor anezo, ha ma teuy o eskern da advleuñvi en o beziou ;

15. Ma chomo o ano da viken, ha ma'z ay d'o mibien gand gloar ar zent.

16. Samuel, profed an Aotrou, a zo bet karet gand an Aotrou e Zoue : ar renadur en-deus nevezet ; priñsed en-deus eouliet en e bobl.

17. Strollad Izrael en-deus barnet hervez lezenn an Aotrou, ha Doue en-deus sellet a zoare mad ouz Jakob. Eur gwir profed eo bet en e feiz.

18. Anavezet eo bet evid beza feal en e gomziou, o veza m'en-deus gwelet Doue ar goulou.

19. Pedet en-deus an Aotrou Ollhalloudeg, o kinniga dezañ eun oan dinamm, pa oa e enebourein o stourmi outañ a bep tu.

20. An Aotrou a ruillas e gurun en neñv, hag a lakaas da glevoud e vouez gand eun trouz braz.

21. Dispenna a reas priñsed Tir, hag oll zuded ar Filistined.

22. A-barz diwez e vuhez e kemeras da dest an Aotrou hag e Grist, penaoz n'en-doa biskoaz kemeret tra ebed digand den, nag arhant, na hentou : ha den ne zeuas d'e damalloud.

23. Goude-ze e kouskas er bez, hag ahano e komzas ouz ar roue, hag e roas da anaoud dezañ diwez e vuhez. Sevel a reas e vouez evid diougani diskar ar bobl en abeg d'he fallagriez.

XLVII. Pennad.

Meuleudi Natan, David, ha Salomon.

1. Goude-ze e savas ar profed Natan e deziou David.

2. Evel ma ranner al lard diouz ar hig, evel-se e oe tennet David euz a douez mibien Izrael.

3. En e yaouankiz e c'hoarie gand al leoned evel gand ein, hag e doare deñvedigou eh aoze an oursed.

4. Ha n'eo ket eñ a lazaz al lañgouineg, hag a dennas ar vezegez digand ar bobl ?

5. E zorn o teurel eur mên gand e vatalm, a ziskaras balhder Goliat :

6. Rag pedi a reas an Aotrou Ollhalloudeg, pehini a roas nerz a-walh d'e zorn, evid diskara eun den kreñv er brezel, hag evid adsevel galloudez e bobl.

7. Evel-se e roas dezañ an enor da veza lazet deg mil den. Meulet e oe en eur venniga an Aotrou ; hag e oe kinniget dezañ eur gurunenn a hloar.

8. Dispenn a reas ar re a stourme outañ a bep tu, hag e kasas da get betevremañ ar Filistined e enebourien, hag e tiskaras o beli da viken.

9. En e oll oberiou eo bet anaoudeg e-keñver an Doue santel, hag en-deus meulet an Uhel-meurbed gand geriou a hloar.

10. Meulet en-deus an Aotrou a-greiz e galon ; karet en-deus an Doue, pehini en-doa e grouet, hag e lakaet da veza kreñv a-eneb e enebourien.

11. Kanerien en-deus lakaet e-tal an aoter, hag en-deus roet dezo binviou c'hwek.

12. Muioh a lid en-deus lakaet er goueliou, hag en-deus kinklet an deizioù sakr beteg diwez e vuhez, evid ma veulje Izrael ano santel an Aotrou ; ha ma vennigje e zantelez adaleg ar mintin.

13. An Aotrou en-deus e walhet euz e behejou, hag en-deus savet e veli da viken ; ar rouantelez en-deus kreteet dezañ gand e gevredigez ; eun tron a hloar en-deus roet dezañ en Izrael.

14. E houde e savas e vab leun a furnez, hag an Aotrou a ziskaras gantañ oll halloud e enebourien.

15. Salomon a renas en eun amzer a beoh, ha Doue a lakaas da blega dindannañ e oll enebourien, evid ma savje eun ti en e ano, ha ma aozje dezañ eur santuar peurbaduz. Penaoz out-te bet desket en da yaouankiz ?

16. A furnez out bet leuniet evel eur ster, hag an douar a zo bet dizoloet d'az ene.

17. Lakaet eh-eus lavariou-goloet e meur a barabolenn : da ano a zo bet brudet beteg en inizi ar re bella ; karet out bet en da ren a beoh.

18. An douar oll en-deus klevet gand souez da ganaouennou, da lavariou-troet, da barabolennou, ha da sklêridigeziou.

19. Meulet en-deus euz a gement-se ano an Aotrou Doue, lesanvet Doue Izrael.

20. Dastumet eh-eus aour evel pa ve arem, hag arhant evel pa ve plom.

21. Goude-ze eh-eus pleget da zaoulin dirag ar merhed, hag eh-eus roet da gorv dezo.

22. Da hloar eh-eus saotret, da ouenn eh-eus gwallet ; ar vuanegjez eh-eus dedennet war da vugale, hag ar hastiz war da ziboell.

23. En heveleb doare ma eo bet rannet da rouantelez, ha ma eo deuet euz a Efraim eur veli dispahuz.

24. Hogen Doue ne zilezo ket e drugarez : ne zispenno ket, ne gaso ket da get e oberiou ; ne gollo ket adaleg ar wrizienn nsted e zilennet ; ha ne gaso ket da get gouenn an hini en-deus karet an Aotrou.

25. Lezet en-deus eun dilerh bennag da Jakob, ha da Zavid eun nsted bennag euz e ouenn.

26. Hogen Salomon a zo maro, hag a zo eet gand e dadou.

27. Lezet en-deus war e lerh eur mab, a zo bet eur skwer a follentez evid e bobl.

28. Jeroboam, den diboell, pehini gand e wall guzul a zistroas e bobl dioutañ ;
 29. Ha Roboam, mab Nabat, pehini en-deus lakaet Izrael da behi, ha digoret da Efraim hent ar fallagriez. Hag ar pehejou a zo bet dihlannaet en o zouez.
 30. O lakaet o-deus da veza kaset kuit euz o bro.
 31. Peb doare o-deus klasket da ober an droug, ken n'eo kouezet ar hastiz warnezo, ha n'en-deus lakaet penn d'o hehejou.

XLVIII. Pennad.

Meuleudi Elias, Elizeas, Ezech'ias hag Isaiaz.

1. Goude-ze e savas ar profed Elias evel eun tan ; hag e heriou a zeve evel eur houlaouenn veo.
2. An naonegez a zegasas en o zouez. He heskina a rejont gand o erez, hag e teujont da eun niver bihan : rag ne hellent ket gouzañvi kelennoù an Aotrou.
3. O komza e ano an Aotrou, e serras an neñv ; hag e lakaas an tan da goueza anezañ a-benn teir gwech.
4. Peger braz eo ar hloar a zo deuet dit. Elias, setu da vurzudou ! Ha piou a hell en em veuli evel d'out ?
5. Te pehini, gand ger an Aotrou Doue, eh-eus lakaet eun den maro da zond er-mêz euz ar bez, hag eh-eus e dennet euz a zaouarn ar maro :
6. Te pehini eh-eus taolet ar roueed el lonk, te pehini eh-eus brevet o beli, hag o lakaet en o fouge da goueza war o gwele a varo :
7. Te pehini a glev war menez Sina barn an Aotrou, ha war menez Horeb barnedigeziou e veñjañs :
8. Te pehini a skuill eoul war ar roueed evid degas ar binijenn, hag a lez profeded war da lerh en da leh :
9. Te pehini a zo bet degemeret en eur gorventenn dan, en eur harr tennet gand kezeg broud :
10. Te pehini a zo bet tonket evid habaskaad buanegez an Aotrou gand ar barnedigeziou a ri en amzer da zond ; te pehini a unvano kalon an tad gand hini ar mab, hag a lakay er stad kenta breuriezou Jakob.
11. Gwenvidig eo ar re o-deus da welet, hag a zo bet mignoned dit ;
12. Rag evidom-ni, ni ne vevom hepken nemed a-hed ar vuhez-mañ ; hogen on ano ne vevo ket en heveleb doare goude or maro.
13. Elias a zo bet skrapet en eur gorventenn ; hogen e spered a zo chomet e Elizeas. Hemañ, a-hed e vuhez, n'en-deus ket bet a aon rag ar briñsed : ha den n'eo bet treh dezañ e galloud.
14. Netra n'en-deus gallet e drehi, ha goude e varo zoken e gorv en-deus diskouezet e oa eur profed.
15. A-zoug e vuhez en-deus greet traou souezuz, ha goude e varo traou burzuduz.
16. E-kreiz an oll vurzudou-ze, ar bobl n'he-deus ket greet pinijenn, ha n'he-deus ket dilezet he fehejou, ken n'eo bet kaset er-mêz euz he bro, ha skignet dre ar bed oll.
17. N'eus chomet nemed eul lod bihan anezo⁴²⁵, hag eur priñs euz a di David.

⁴²⁵ anezo : tud ar bobl.

18. Lod anezo o-deus heuliet youl Doue ; hogen ar re all o-deus greet kalz a behejou.

19. Ezec'hias en-deus kreñvaet e gêr, hag en-deus degaset dour en he hreiz : toullet en-deus ar roh gand an houarn, hag en-deus greet eur puñs evid miroud an dour.

20. En e amzer e pignas Sennacherib, pehini a gasas Rabsasez a-eneb tud Jeruzalem. Hag hemañ a zavas e zorn warnezo : astenna a reas e zorn a-eneb Sion, hag e halloud e lakaas da veza balh.

21. Neuze ar spont a waskas war o halon hag war o daouarn, hag e keinjont evel eur wreg e gwilioud.

22. Hag i a bedas an Aotrou leun a drugarez ; astenna a rejont o daouarn, hag e savjont anezo etrezeg an neñv : hag an Aotrou Doue santel a glevas buan o mouez.

23. N'en-doa mui a goun euz o fehejou, ha n'o lakaas ket da goueza etre daouarn o enebourien ; hogen o glana a reas gand daouarn Isaias, e brofed santel.

24. Dismantra a reas kamp an Asiried ; hag êl an Aotrou o dispennas.

25. Hag Ezec'hias a reas ar pezh a oa hetuz da Zoue ; gand kalon e valeas e hent David e dad, a oa bet diskouezet dezañ gand Isaias, profed braz ha feal dirag an Aotrou.

26. En e zeiziu ez eas an heol war e giz, hag e kreskas buhez ar roue.

27. Gand eur spered braz e welas an deiziu diweza ; hag e tizoanias ar re a wele e Sion.

28. Diougani a reas ar pezh a dlee da hoarvezoud beteg diwez an amzeriou, hag e roas da anaoud an traou kuzet a-barz ma teujent.

XLIX. Pennad.

Meuleudi Josias, Jeremias, Ezec'hias, hag e se.

1. Eñvor Josias a zo evel eul louzou c'hwez-vad aozet gand eul louzaouer gouizieg.

2. An eñvor anezañ a vezo c'hwek e genou an dud oll evel mel, hag evel eur strollad kanerien en eur banvez gwin.

3. Dileuriet eo bet gand Doue evid lakaad ar bobl da ober pinijenn : dismantret en-deus ar fallagriezou argaruz.

4. Troet en-deus e galon ouz an Aotrou ; hag e deiziu ar pehejou en-deus startaet e zoujañs e-keñver Doue.

5. Nemed David hag Ezec'hias, ha Josias, oll roueed Juda o-deus pehet ;

6. Rag dilezet o-deus lezenn an Uhel-meurbed, hag o-deus disprizet doujañs Doue.

7. Lezet o-deus o rouantelez da eur bobl all, hag o gloar da eur vroad a-ziavêz.

8. An diavêzidi-ze o-deus lakaet an tan er gêr zilennet, er gêr zantel : didud o-deus lakaet he ruou, hervez diougan Jeremias :

9. Rag gwall-aozet o-deus an hini a oa bet gouestlet da brofed e kov e vamm, ha dileuriet evid diskara, evid dismantra, evid kolla, hag evid adsevel ha nevezi.

10. Ezec'hias eo en-deus gwelet ar ouiziegezh a hloar, en-deus diskouezet an Aotrou dezañ e karr ar Jerubined.

11. Rag arouezet en-deus gand ar glao an droug a dlee da goueza war an enebourien, hag ar mad a zeuje gand ar re o-doa heuliet an hent eeun.

12. Ra advleunio en o beziou eskern an daouzeg profed bihan : rag kreñvaet o-deus Jakob, hag o-deus e zasprenet gand eur feiz stard.

13. Penaoz e veulim-ni gloar Zorobabel, a zo bet evel eun arouez e dorn dehou an Aotrou ;

14. Ha Jezuz, mab Josedek : rag i o-daou o-deus adsavet ti an Aotrou, da dempl santel evid e hloar beurbaduz ?

15. Eñvor Nehemias a bado ivez pell amzer, eñ pehini en-deus adsavet or muriou diskaret, en-deus nevezet on doriou hag or potaillou, hag adsavet on tiez.

16. Hini ebed n'eo bet ganet war an douar evel Enoch, pehini goude-ze a zo bet skrapet diwar an douar ;

17. Nag evel Jozef, pehini a zo bet ganet evid beza priñs e vreudeur, skoazell e diad, rener e vreudeur, ha skor e bobl.

18. O eskern a zo bet emwelet, hag i o-deus diouganet goude e varo.

19. Set ha Sem a zo bet gorreet e gloar e-touez an dud, hag Adam en e grouidigez a zo bet savet dreist an oll grouaduriou.

L. Pennad.

Meuleudi Simon, mab Onias. E bedenn.

1. Simon, mab Onias, beleg-braz, en-deus skoazellet ti an Aotrou, a-hed e vuhez, hag en-deus kreñvaet an templ en e zeiziou.

2. Eñ eo en-deus greet diazez an templ, an ti daou-hanter, hag ar muriou uhel.

3. En e amzer eo bet redet an dour er puñsou : peurleuniet int bet evel eur mor.

4. Prederiet eo bet gantañ e bobl ; hag euz ar gollidigez en-deus he dieubet.

5. Kresket ha kreñvaet en-deus kêr : dellezet en-deus gloar gand e vuhezegez e-keñver ar bobl ; ledannaet eo bet gantañ dor an templ hag al leurenn.

6. Luhet en-deus en-deus en e zeiziou evel ar werelaouenn e-kreiz ar hoabr, hag evel al loar en he hann.

7. Lugernet en-deus e templ Doue, evel eun heol lugernuz.

8. En em ziskouezet eo bet evel ar wareg a luh en eur goabrenn houlaouuz, hag evel bleun roz an nevez-amzer, hag evel al lili a zo war aod an doureier, hag evel eur wezenn ezañs a ro he c'hwez-vad en hañv ;

9. Evel eun elienenn dan, hag evel ezañs a zivoged war an tan ;

10. Evel eul lestr aour fetiz goloet a vein talvouduz a beb doare.

11. En em ziskouezet eo bet evel eur wezenn-olived a daol kreskou, hag evel eur wezenn-siprez a zav uhel, pa en-deus kemeret e zae a hloar, ha gwisket oll ginklerezou e garg.

12. O pigna d'an aoter zantel, en-deus enoret e wiskou santel.

13. Oh en em zerhel en e zav e-tal an aoter, en-deus degemeret lod euz an ostiv euz a zorn ar veleien : war e dro edo e vreudeur evel eur gurunenn ; hag i sonn evel gwez-sedr war menez Liban ;

14. Hag evel skourrou palmez edo oll vibien Aaron en-dro dezañ en o luf.

15. Ar hinnig a oa greet gand o daouarn dirag strollad Izrael : hag evid peurober ar sakrifis ouz an aoter, hag evid enori kinnig ar roue Uhel-meurbed,

16. En-deus astennet e zorn, evid kinniga dezañ gwad ar winienn ;
17. En-deus skuillet ouz treid an aoter eur gwin a behini ar c’hwez-vad a zo pignet beteg ar priñs uhel-braz.
18. Neuze mibien Aaron o-deus laosket eur harm braz, hag o-deus sonet gand o hornou-boud goveliet, hag o-deus greet eun trouz braz, evid niveri an eñvor anezo dirag an Aotrou.
19. Neuze an oll bobl a zo deuet kevred, hag a zo en em daolet war he genou d’an douar, evid azeuli an Aotrou o Doue, hag evid pedi an Doue Uhel-meurbed.
20. Ar ganerien o-deus savet o mouez en o hanaouennou, hag o-deus greet eun trouz c’hwek en ti braz-se.
21. Ar bobl he-deus kinniget he fedenn d’an Aotrou Uhel-meurbed, ken n’he-devezo douget dezañ an enor a zo dleet dezañ, ha na vezo peurhreet o harg ganto⁴²⁶.
22. Neuze ar beleg-braz o tiskenni euz an aoter, en-deus savet e zaouarn war oll strollad mibien Izrael, evid rei gloar da Zoue gand e vuzellou, hag evid en em veuli en e ano.
23. Nevezet en-deus e bedenn evid diskoueza e feiz e galloud Doue.
24. Pedit eta bremañ Doue an oll⁴²⁷, pehini en-deus greet traou braz en douar oll, pehini en-deus kresket on deziou adaleg kov or mamm, hag en-deus on aozet hervez e drugarez.
25. Ra roy deom levenez ar galon, ha ra lakay ar peoh da rena en Izrael a-hed on deziou, ha da viken.
26. Ra lakay Izrael da gredi stard penaoz ema trugarez Doue warnom, evid ma tieubo anezo en o deziou.
27. Va ene a gasa diou vroad : hag an drede a gasaan n’eo ket eur vroad ;
28. Ar re a chom war menez Seir, hag ar Filistined ; hag ar bobl diskiant a chom e Siche.
29. Jezuz, mab Sirac’h, euz a Jeruzalem, en-deus skrivet el levr-mañ kelennou leun a furnez hag a ouiziegez ; furnez e galon en-deus nevezet ennañ.
30. Eüruz eo an hini a vir e ar geriou mad-mañ : an hini o laka en e galon, a vezo fur bepred :
31. Rag ma heul anezo, e vezo mad da bep tra ; rag goulou Doue a reno e gammejou.

LI. Pennad.

Jezuz, mab Sirac’h, a veul Doue hag a drugarekaa anezañ.

1. Pedenn Jezuz, mab Sirac’h : Da anzavoud a rin, o ! Aotrou va roue ; da veuli a rin, va Doue, va Zalver.
2. Anzavoud a rin da ano, o veza ma out bet da skoazell ha da warez din.
3. Dieubet eh-eus va horv euz ar gollidigez, euz a lingadou an teod direiz, hag euz a vuzellou ar re haouiad : bet out da ziwaller din a-eneb ar re a damalle ahanon.

⁴²⁶ ganto : gand tud ar bobl.

⁴²⁷ Pedit eta bremañ Doue an oll : pedit oll...

4. Va dieubet eh-eus, hervez al lod braz euz da drugarezou, euz al loened yuduz⁴²⁸, a oa dare d'am lonka.

5. Euz a zaouarn ar re a felle dezo va laza, hag euz an ankeniou braz a waske warnon a bep tu ;

6. Euz a ziboell ar flammou a oa en-dro din ; ha n'on ket bet losket e-kreiz an tan ;

7. Euz a zonder lonk an ivern, euz an teod saotret, euz a lavariou ar re haouiad, euz a eur roue direiz, hag euz ar gwall deodou.

8. Va ene a veulo an Aotrou beteg ar maro ;

9. O veza ma oa dare da goueza e goueled an ivern.

10. En em lakaet e oant en-dro din a bep tu, ha ne oa den evid va skoazella. Skoazell a heden digand an dud, ha ne zeue ket din.

11. Neuze, Aotrou, eo deuet koun din euz da drugarez, hag euz da oberiou adaleg ar penn kenta :

12. O veza ma tennez euz an droug ar re a laka o ged ennout, ha ma tennez anezo euz a zaouarn ar broadou.

13. Eun ti eh-eus savet din war an douar ; hag em-eus da bedet da denna ahanon euz a froud ar maro.

14. Pedet em-eus an Aotrou, tad va Aotrou⁴²⁹, evid n'am dilezo ket diskoazell e deiz va enkrez hag e amzer ar re rog.

15. Meuli a rin da ano bepred, hag eh enorin anezañ em pedennou, o veza ma eh-eus klevet va fedenn :

16. Ma eh-eus va zennet euz ar gollidigez, ha ma eh-eus va zennet euz an droug en amzer direiz.

17. Rag se eh anzavin ahanout, e kanin da veuleudiou, hag eh enorin ano an Aotrou.

18. Pa oan c'hoaz yaouank, a-barz ma oan bet faziet, em-eus klasket gand lealded ar furnez em pedenn.

19. E-tal an templ em-eus he goulennet ; hag e enklaskin anezi beteg va maro. Hag hi a zo bet bleuniet ennon evel rezin abred ;

20. Ha va halon a zo en em laouennaet enni. Va zreid o-deus baleet etrezeg enni dre eun hent eeun ; he hlasket em-eus adaleg va yaouankiz.

21. Dinaouet em-eus eun nebeud va skouarn, hag eo bet roet ar furnez din.

22. Eur furnez vraz em-eus kavet ennon, ha muioh-mui on eet enni.

23. Rei a rin ar hloar d'an hini en-deus roet ar furnez din :

24. Rag lakaet em-eus em fenn ober ar pezh a hourhemenn din. Birvidig on bet e-keñver ar mad, ha ne vezin ket mezekaet.

25. Gourenet en-deus va ene evid tizoud ar furnez, hag on bet kreñvaet oh he heulia.

26. Va daouarn em-eus savet ouz kreh, hag em-eus keinet diwar-benn va follentez.

27. Va ene em-eus renet etrezeg ar furnez, hag er ouiziegez em-eus he havet.

28. Adaleg ar penn kenta em-eus piaouet va halon ganti : rag se ne vezin ket dilezet.

29. Va hov a zo bet strafuillet oh he hlaskoud : ha dre-ze em-bezo kerz en eur mad ker braz.

30. An Aotrou en-deus roet din evid gopr eun teod : ha gantañ e veulin anezañ.

⁴²⁸ yuduz : yud.

⁴²⁹ tad va Aotrou : ?

31. Tostait ouzin, c’hwi pere a zo diskiant ; hag en em strollit e ti ar helenn.
32. Perag e taleit-hu c’hoaz ? Ha petra a livirit-hu a gement-mañ ? Hoh eneou o-deus eur sehed braz.
33. Digoret em-eus va genou, hag em-eus komzet : prenit-hi⁴³⁰ heb arhant.
34. Soublit ho chouk dindan ar yeo : ra zegemero hoh ene ar helenn ; rag tost eo, hag eo êz e gavoud.
35. Gwelit gand ho taoulagad penaoz em-eus labouret eun nebeud, hag em-eus kavet eun ehan braz.
36. Degemerit ar helenn evel kalz a arhant, hag e kavot ennañ eul lod braz a aour.
37. R’en em laouennay hoh ene e trugarez an Aotrou ; hag o veuli anezañ ne viot ket mezekaet.
38. Grit hoh ober a-barz an amzer, hag e roy deoh ho kobr en e amzer.

⁴³⁰ hi : ar furnez.